

BUEZ AR ZENT

GREAT GANT AN AOTROU MARIGO

NEVEZET EVIT AN EIL GUECH

GANT AN AOTROU MADEC, e Kerinou Lambezellec

El levr-man e kaver halz euz bueziou Sent Breiz
ha Bueziou ar re a zo nevez diskleriet sent



E BREST

E ti D. DERRIEN, Leorier

52, ru Siam, 52

1927

BUEZ AR ZENT

BUEZ AR ZENT

GREAT GANT AN AOTROU MARIGO

NEVEZET EVIT AN EIL GUECH

GANT AN AOTROU MADEC, e Kerinou Lambezellec

El levr-man e kaver halz euz bueziou Sent Breiz
ha Bueziou ar re a zo nevez diskleriet sent



E BREST

E ti D. DERRIEN, Leorier

52, ru Siam, 52

1927

NIHIL OBSTAT

J.-L. LE BARS, Censor

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die XVII^o Octobris 1925.

P. JONCOUR,
VIC. GEN.

Tous droits de propriété réservés

D'AL LENNER

Kenta levr brezouneg a dle beza e peb ti a zo Buez ar Zent, rak en tiegeziou a zo e guirionez kristen, ar beden vraz a vez lavaret bemdez gant an oll asamblez, hag araok ar Bater vraz e lle beza lennet eur gentel euz Buez ar Zent.

Perak Buez ar Zent kentoc'h eget eul levr all?

Abalamour ar Zent a zo mignoured Doue, hag ho buez a zikour ac'hanoump da anaout quelloc'h madelez ha galloud an Aotrou Doue. Seulvui e poagnimp da anaout Doue var an douar, seulvui e tigoro hor spered d'He anaout quelloc'h er baradoz.

Ar Zent azo hon alvokadet, ha dre-ze eo mad d'eomp ho anaout. An neb a ia da c'houlenn aluzen digant eun den pinvidik, a zo eüruz pa anavez mignoured pe zervicherien ar pinvidik-se; easoc'h eo d'ezan kaout he c'houlenn. Ni a zo oll peorien Doue, ezom on deuz bemdez euz he c'hrasou; mac'h anavezomp mad ar zent, mac'h anavezomp dreist oll ar zant a zo he c'houel o ren, a zo deuet he zevez da skuill grasou Doue var an dud, on devezø buannoc'h hor goulennou.

Ar Zent a zo eur skouer evidomp. N'eo ket mad d'eomp, guir eo, klask ober kement tra o deuz great, kement o deuz great hiniennou dreist oll, evel sant Simon Styliit a vevaz var eur pilier, evel an ermitè a vevaz er c'hoajou, evel sant Per Alkantara ha sant Ian ar Groaz a reaz piniennou ker spountuz; met mad eo deomp sonjal er pedennou, er piniennou o deuz great ar zent, evit ober muioc'h hon-unan evit Doue.

Ne c'hellit ket choum heb dibri epad daou na tri devez, mar grafac'h kement-se e kolfac'h ho iec'hed; met dibri a c'hellit eun tam nebeutoc'h d'ho pred, abalamour da Zeue. Ne c'hellit ket choum pemp heur na c'honoc'h heur dioc'h tu var pennou ho taoulin, evel sent a zo; met mont a c'hellit d'ar gousperou eur zulvez m'oc'h euz digarez aoualc'h da jom er gear, lavaret eur Bater muioc'h d'ho pedennou dioc'h ar mintin, a rit kalz re verr avechou.

Al levr Buez ar Zent great gant an Aotrou Marigo, persoun e Beuzec-Comq, en deuz great kalz a vad d'hon tud koz en eskopti; lennet e vez c'hoaz e tiegeziou a zo. Mes he prezou neg a zo re dost-kar d'ar gallek; abalamour da ze, eo bet red mad chench meur a dra el leor-man, koulz hag en hini a zo bet moullèt ganen pemzek vloaz a zo.

Ouspenn-ze, kaout a reoc'h el levr-man, muioc'h a zent euz hor bro, euz ar re o deuz komzet brezounek evelomp; devo-
toc'h e vezer o pedi ar zent-se, dre m'o deuz glebiet gant ho,
c'houezen an douar a c'hlebiomp hon-unan; m'o deuz bet
dirak ho daoulagad ar parkeier, ar c'hoajou, ar foenneier a
velomp; abalamour m'o deuz pedet el leac'hiou ma pedomp
ennho, ha m'o deuz komzet e brezounek evelomp.

Ha neuze, sent koz Breiz Izel a zo hor zent d'eomp-ni. Ar
zent all, sant Per, sant Paol, sant Fransez a zo pedet gant
kristenien ar bed oll, e leac'h sant Korantin, sant Paol a Leon,
sant Herbot ha meur a hini all n'int pedet nemet ganeomp-
ni. Bezomp eta leun a fizians ennho. Euz hor ouenn, euz hon
orin int.

Guir eo, meur a dra a zo kuzet ouzimp divar benn ho buez,
hag abalaomur da-ze, ar skrivanierien n'en em glevont ket
atao divar benn hiniennou anezho. Perak kement-se? Aba-
lamour m'eo bet kollet meur a hini euz skridou an amzer
guechall, hag abalamour hor zent koz a boanie kalz da zastum
meritou evit ar baradoz, ha ne boaniet tam da ziskleria d'an
dud ar vad a reant. Bez' e oant mad da ober, fall da skriva.
Eürusoc'h a-ze e vezimp, oc'h anaout ho buez, piz ha piz,
divezatoc'h, er baradoz.

Goude Buez ar Zent, e kaver, e serr al leor, Buez eun ne-
beudik euz servicherien vras an Aotrou Doue, gant eur gen-
tel var an Itroun-Varia a Bontmain: lenn a c'heller ar c'hen-
teliou-ze, d'ar zul goude kresdeiz, pa vez amzer.

Da c'houde, e kaver ar pedennou dioc'h an noz e brezou-
nek, gant an akt a gonzekrasion d'ar Galon Zakr ha d'ar Ver-
c'hez, promesaou ar Vadiziant, ar beden d'ar Famill Zantel
ha da zant Joseph patron ar Maro Mad. Ar re o dese
c'hoant kaout pedennou all, ho c'havo e Levr Kantikou an
eskopti pe en eul Levr oferen brezounek.

Ra zeui al levr-man d'ho sikour da bedi startoc'h, da vev
quelloc'h; pa viot dibreder, livirit mar plij eur bedennik evit
an hini en deuz he skrivet hag ar re o deuz he zikouret da gas
he labour da benn. Ha ra zeui Doue d'hor boda eun deiz en
env, eno e velimp pegen disliv eo hor c'homzou, pegen dister
eo hor c'hantikou var an douar, pa rentomp meuleudi d'ar
Zent a zo e gloar Doue er baradoz.

Kerinou, e Lambazellec, deiz gouel Nedelek, 1925.

Y.-M. MADEC.



DA ROUANEZ AR ZENT

Guere'hez Gloriuz Vari, Merc'h an Tad Eternel, Mam
Doue ar Mab, Pried ar Spered Glan, Rouanez an Elez
hag an oll Zent, hon Alvokadez, hor Patrounez, hor
Mam dous ha mad, d'eoec'h-hu eo e kinnigan al levr-
man; grit var-nan, me ho ped, var-nan ha var ar re o
deuz he skrivet, eur zell madeleuz.

Sklerijennit spered ar re hel lenno, evit ma teufent
da entent mad ar c'henteliou a zo ennan, da anaout ar
Zent a zo hon difennourien dirak Doue, ho mignouned
d'eoec'h-hu, o Guere'hez benniget; entanit kaloun al
lennerien, evit ma teuint da lavaret gant sant Aogustin:
« Perak ne rafen-me ket ar pezh o deuz great re all, tud
» eveloun » ha ma teuint da zispenn roudou ar Zent,
hor skouer.

C'houi oc'h euz, o Mam benniget, tenerroc'h kaloun
ha karantez eget an oll mammou all asamblez, goulenn-
nit evidomp grasou Doue. Jesus ne raio morse ar
skouarn vouzar ouzoc'h, roet en deuz d'eoec'h, atao,
hoc'h oll goulenno. Hor zikourit eta, da vale var ho
roudou ha re ar zent; neuze, o Mam Gallouduz, ni a
vezo eüruz eun devez, o veuli ganeoc'h an Drindet
santel da viken.

EVELSE BEZET GREAT

Ouspenn-ze, kaout a reoc'h el levr-man, muioc'h a zent euz hor bro, euz ar re o deuz komzet brezounek evelomp; devo-
toc'h e vezer o pedi ar zent-se, dre m'o deuz glebiet gant ho
c'houezen an douar a c'hlebiomp hon-unan; m'o deuz bet
dirak ho daoulagad ar parkeier, ar c'hoajou, ar foenneier a
velomp; abalamour m'o deuz pedet el leac'hiou ma pedomp
ennho, ha m'o deuz komzet e brezouneg evelomp.

Ha neuze, sent koz Breiz Izel a zo hor zent d'eomp-ni. Ar
zent all, sant Per, sant Paol, sant Fransez a zo pedet gant
kristenien ar bed oll, e leac'h sant Korantin, sant Paol a Leon,
sant Herbot ha meur a hini all n'int pedet nemet ganeomp-
ni. Bezomp eta leun a fizians ennho. Euz hor ouenn, euz hon
orin int.

Guir eo, meur a dra a zo kuzet ouzimp divar benn ho buez,
hag abalaomur da-ze, ar skrivanierien n'en em glevont ket
atao divar benn hiniennou anezho. Perak kement-se? Aba-
lamour m'eo bet kollet meur a hini euz skridou an amzer
guechall, hag abalamour hor zent koz a boanie kalz da zastum
meritou evit ar baradoz, ha ne boaniet tam da ziskleria d'an
dud ar vad a reant. Bez' e oant mad da ober, fall da skriva.
Eürusoc'h a-ze e vezimp, oc'h anaout ho buez, piz ha piz,
divezatoc'h, er baradoz.

Goude Buez ar Zent, e kaver, e serr al leor, Buez eun ne-
beudik euz servicherien vras an Aotrou Doue, gant eur gen-
tel var an Itroun-Varia a Bontmain: lenn a c'heller ar c'hen-
teliou-ze, d'ar zul goude kresdeiz, pa vez amzer.

Da c'houde, e kaver ar pedennou dioc'h an noz e brezou-
nek, gant an akt a gonzekrasion d'ar Galon Zakr ha d'ar Ver-
c'hez, promesaou ar Vadiziant, ar beden d'ar Famill Zantel
ha da zant Joseph patron ar Maro Mad. Ar re o defe
c'hoant kaout pedennou all, ho c'havo e Levr Kantikou an
eskopti pe en eul Levr oferen brezounek.

Ra zeui al levr-man d'ho sikour da bedi startoc'h, da vev
guelloc'h: pa viot dibreder, livirit mar plij eur bedennik evit
an hini en deuz he skrivet hag ar re o deuz he zikouret da gas
he labour da benn. Ha ra zeui Doue d'hor boda eun deiz en
env, eno e velimp pegen disliv eo hor c'homzou, pegen dister
eo hor c'hantikou var an douar, pa rentomp meuleudi d'ar
Zent a zo e gloar Doue er baradoz.

Kerinou, e Lambezellec, deiz gouel Nedelek, 1925.

Y.-M. MADEC.



DA ROUANEZ AR ZENT

Guere'hez Gloriuz Vari, Merc'h an Tad Eternel, Mam
Doue ar Mab, Pried ar Spered Glan, Rouanez an Elez
hag an oll Zent, hon Alvokadez, hor Patrounez, hor
Mam dous ha mad, d'eoec'h-hu eo e kinnigan al levr-
man; grit var-nan, me ho ped, var-nan ha var ar re o
deuz he skrivet, eur zell madeleuz.

Sklerijemmit spered ar re hel lenno, evit ma teufent
da entent mad ar c'henteliou a zo ennan, da anaout ar
Zent a zo hon difennourien dirak Doue, ho mignouned
d'eoec'h-hu, o Guere'hez benniget; entanit kaloun al
lennerien, evit ma teuint da lavaret gant sant Aogustin:
« Perak ne rafen-me ket ar pezh o deuz great re all, tud
» eveloun » ha ma teuint da zispenn roudou ar Zent,
hor skouer.

C'houi oc'h euz, o Mam benniget, tenerroc'h kaloun
ha karantez eget an oll mammou all asamblez, goulen-
nit evidomp grasou Doue. Jesus ne raio morse ar
skouarn vouzar ouzoc'h, roet en deuz d'eoec'h, atao,
hoc'h oll goulenno. Hor zikourit eta, da vale var ho
roudou ha re ar zent; neuze, o Mam Gallouduz, ni a
vezo eüruz eun devez, o veuli ganeoc'h an Drindet
santel da viken.

EVELSE BEZET GREAT

BUEZ ar ZENT

AR C'HENTA DEVEZ A VIZ GENVER

SIRKONSIZION HOR ZALVER

Kristenien, e'houi o peuz eur e'hoant ker braz da veza eüruz eun devez er baradoz, goude beza great ho treuz var an douar, grit eun implij mad euz ar bloavez all-man a zo roet d'eoc'h gant Doue. Livirit hirio a greiz kaloun: « Va Doue, sonj am euz d'hoc'h henori » euz va oll galloud epad ar bloavez-man; rei a rit d'in » en ho trugarez ar penn kenta anezan, va zikourit d'he » dremen en ho karantez. »

Penaos e e'helfac'h choum heb karet Jesus-Christ? Hen en deuz ho karet da genta: diskennet eo euz an env, en em e'hreat eo den evit ho silvidigez; hag eiz dez goude m'eo ganet, en deuz skuillet ar beradou kenta euz he e'hoad sakr, kement a vall en doa da verka ar garantez heb muzul en deuz evit an dud. Ia, a veac'h m'eo deut er bed, e poagn dija evit hor zavetei hag hor e'helen.

Lezen ar Zirkonsizion a oue roet gant Doue da Abraham: « Kement paotr a e'hano en ho lignez, eme Zoue, » a vezo sirkonsizet, da lavaret eo, a vezo great eur » merk en he gorf d'an eizved devez. »

Ar Zirkonsizion a lakea ar goad da redet, bez' e oa merk pobl Doue, effasi a rea ar pec'hed orijinel er guel euz a veritou Hor Zalver, abalamour ma verke e kredet er Zalver a dlie dont.

Hor Zalver Jesus-Christ, ar zantelez dre natur, ne oa ket red d'ezan beza sirkonsizet, rak ne e'helle kaout

pec'hed ebet, pa 'z eo guir e oa Doue. Senti a reaz eve-lato ouz al lezen-ze: da genta evit rei d'eomp eur skouer kaer a humilite; d'an eil, evit rei d'eomp eur skouer a zentidigez, o viret eul lezen great evit an dud all, evit ar bec'herien; d'an trede, evit deski d'eomp karet ar poaniou hag an diezanchou; d'ar pevare, evit diskouez he garantez evidomp, ar garantez-se a rea d'ezan skuill dioc'htu eur berad benag euz he c'hoad, da c'hortoz ma c'helfe skuill ar beradou diveza var koat ar Groaz.

Da zeiz ar Sirkonsizion eo e veze hanvet ar c'hrouadur; neuze e teuz eta Mab Doue da veza hanvet Jesus, da lavaret eo Salver. An hano-ze a oa bet diskleriet gant an arc'heal Gabriel, var urz Doue he-unan, d'ar Ver-c'hez Vari: « Lakât a reoc'h er bed eur mab, he henvel » a reoc'h Jesus. »

SONJOMP ERVAD :

I. — Jesus-Christ a ro d'eomp er myster-man eur merk braz euz he garantez, hag euz ar c'hoant birvidik en deuz d'hor zavetei. Rentomp eta d'ezan karantez evit karantez, en eur labourat evit hor zilvidigez, rak an dra-ze eo a c'houlen diganeomp. Jezuz en deuz great he-unan en tu all d'ar pez a zo red evit hor zavetei: hon diframmet en deuz digant an drouk-spered, hor great en deuz mignouned Doue, gounezet en deuz deomp grasou kaer evit hor zilvidigez. Met lakit kement-man doun en ho spered: ma na reomp ket eun implij mad euz ar grasou a zo bet gounezet d'eomp gant Jezuz, he oll labourou, he boaniou, he c'hoad sakr a vezo kollet evidomp. En em goll a raimp neuze, hag e virimp n'en defe Jezuz an henor hag al levenez da veza hor zaveteat. Pebez keuz evidomp eun deiz, mar bez red d'eomp anza: « Kol- » let oun, dre va faot eo; kollet, en despet d'eur Zalver ker » madelezuz! » Setu dija meur a vloavez tremenet, ha mar-teze kollet evidomp; penaoz ec'h implijimp-ni amzer ar bloavez-man?

II. — Henoromp hano santel Jesus, leveromp anezan aliez, met atao gant respet, fizians ha devosion; sonjomp en he garantez, en he vadelez, en he drugarez en hor c'henvet. Pa

vezimp gant hor c'henvet diveza, hano Jesus eo a vezo lavaret d'eomp evit hor c'henvet, hor c'henvat e poaniou ar maro; bez' e fle beza ar gomz diveza a livirimp; lavaromp eta aliez divar vremen an hano kaer-ze, evit gellout he lavaret gant muioc'h a-ze a zevosion hag a fizians pa vezimp var hon tremenvan.

Hano santel Jesus a ra tridal an elez, a spout an drouk-sperejou, a zo eun eienen a c'hrasou evit ar gristenien. « Hag ankeniet oc'h, eme zant Bernard, livirit a galoun hanó » Jesus, hag e viot konsolet. Ha nec'het oc'h gant rebechou » ho koustians, kerkent ha m'o pezo lavaret: Jezuz, ar fizians » a reno en ho kaloun, hag an diaoul a ranko tec'het kuit. O » hano leun a zaour hag a deneredigez, a ra aliez skuill dae- » lou epad ar beden a galoun, hag a ro eun nerz nevez en » trubuillou brasa! Piou en deuz biskoaz lavaret an hano » santel-ze, heb beza kerkent selaouet ha kennerzet? Piou » a zo en em erbedet ouz Jesus en tentasionou brasa, ha » n'eo ket bet treac'h d'an drouk-sperejou galloudusa? Hano » Jesus, eme c'hoaz sant Bernard, a zo eun nerz er stourma- » jou, eur sklerijen en trubuillou, eur gonsolasion er poa- » niou; eun hano a zilvidigez da heur ar maro, evit ar re o » deuz her skrivet doun en ho c'haloun epad ho buez. »

Leveromp eta aliez, a greiz hor c'haloun, ar c'homzou dous ha tener-man:

O va Jesus! o va c'harantez!

Bezit em c'haloun, ha bemnoz ha bemdez.

AN EIL DEVEZ A VIZ GENVER

Sant ODILON, Abad

(962-1049)

Sant Odilon a zeuz var an douar en Auvergn, er bloaz 962.

He dad hag he vam a oa troet da zervicha Doue, hag a rene eur vuez kristen; ho mab a oue desket da veza

bepred en he zoujans. Skoet e oue gant eur guall glenved pa oa e'hoaz krouadur, ha chom a reaz ker seizet ma ne c'helle finval hini euz he izili. Eur plac'h a zioualle atao ar paotrik da e'houde. Eun devez, ar plac'h a laoskaz Odilon he-unan eur pennadik, e porched iliz an Itroum Varia. Ar paotrik, guella ma c'helle, a reaz eur ruill dreist an treujou, hag en em ruzaz betek an aoter vraz; evit sellet ouz skeuden ar Vere'hez Santel, e klaskaz sevel var he dreid. An Itroum-Varia, evel eur vam vad ma 'z eo, a gennerzaz ar bugel. Kerkent ha ma santaz nerz en he zivesker, Odilon a zavaz en he zav: beza en doa bet ar c'herzet, hag e teuz da gaout he vagerez en eur vale. Ne ankounac'heaz ket ar c'hras kaer-ze, hag e doug he vuez e oue anaoudeg d'an Itroum Varia. Pa gave tro, ne vanke morse da zougen ar re all d'he henori ha d'he c'haret, ha iaouank flamm e oa e'hoaz p'en em dennaz e kouent Kluny. Biskoaz ne oue guelet eur manac'h o c'heuil ar reolen gant muioc'h a nerz-kaloun egethan; laouen e veze atao o staga d'ar binijen, n'euz fors peger rust e vije d'ar c'hig.

Ne c'helle ket tenna divar he spered karantez Jesus-Christ evidomp e Sakramant meulet ra vezo an Aoter; n'eo choumet devez ebet, epad c'houec'h vloaz hag hanter-kant, heb lavaret an oferen. Epad ma kinnige ar zakrifis santel, e skuille daelou puill, ken tenerreat e veze he galoun o sonjal e Pasion hag e maro Jesus-Christ.

Sant Mayeul, abad he gouent, o veza kouezet klanv, her choasaz evit beza abad en he c'houde. Odilon, o kemeret ar garg-se, a ententaz ervad e tlie beza divar neuze, muioc'h e'hoaz eget araok, eur skouer evit an oll relijiuzet. Atao e veze guelet ar c'henta o tont d'an offis.

An anaon keiz a zo ankounac'heat e tan ar purkator. Ar zonz-se hen lakea da ober bep er mare, pedennou ha pinijennou kalet evit souplât ho foan. Kement a d'rucez en devoa outo, hag ar re-man her guje, ma teuent d'an abati, evel pa vijent bet eno er gear.

Kement e oa istimet gant an Tad Santel ar Pab, gant ar Romaned, ma oue karget, meur a veeh, da zilua ar c'hudennou ar muia rouestlet.

Kasimir, roue ar Pologn, harluet euz he rouantelez gant an dispac'herien savet en he enep, a deuz da gouent Kluny da glask diskuiz d'he spered. Gounezet gant komzou sant Odilon, ar prins-se a gemeraz eno sae ar venee'h.

An Abad santel a reaz sevel e Kluny eun iliz, hag a zo unan euz ar re gaera er vro. C'hoant braz en doa e vije savet ilizou goubariet brao, ha guisket kaer.

Evit an offisou, ne gave morse re binvidig ar guiskamanchou sakr; laouen e veze pa gleve eun ofis kanet mad.

En he glenved diveza, goude beza resevet he oll zakramanchou, Satan a dosteaz da glask tenvallât peoc'h he galoun, met ar zant a reaz sin ar groaz, a lavaraz hanoiou santel Jesus ha Mari, hag ar spered fall a oue red d'ezan tee'het. Neuze en devoue en he galoun eun tanva euz eüruzdet ar baradoz.

Mervel a reaz, e kouent Souvigny, en deiz kenta euz ar bloaz 1049.

SONJOMP ERVAD :

Anzao a reomp eo bet fur ar Zent o veva evel m'o deuz great; anzao a reomp n'o deuz ket great re evit mervel sent, ha n'int ket bet faziet var ho hent. Fizians on deuz da veza ive sent, perak eta ne vevomp-ni ket, evel ma o deus hi bevet? Pa fell d'eomp digouezout en env, perak ne valeomp-ni ket gant an hent a gas di? Petra a zonzomp euz ar Zent? Ha kredi a rafemp-ni zoken ez int bet sent, ma ne vijent ket bet guelloc'h kristenien egedomp-ni, direbec'oc'h, muioc'h douget d'ar binijen, d'an humilite, d'ar relijion? Hor buez o veza ken dishenvel diouz ho hini, ha leac'h en deuz-ni da fiziout eveldo var eur maro santel?

Sonzomp en traou-ze a zevri, ha divar ar bloaz nevez-man, divar hirio zoken, heuliomp skueriou ar zent, baleomp var ho roudou. Mar sonjomp er skueriou mad o deuz roef d'eomp, hor c'halonou a zeui da domma, hag e raimp ar pez o deus great kalz sent en hon raok. O kerzet evelse var ho lerc'h, ec'h en em gavimp eun deiz er baradoz ganto.

AN TREDE DEVEZ A VIZ GENVER

SANTEZ JENOVEFA

(422-512)



Jenovefa a velaz sklerijen an deiz var dro ar bloaz 422, e kear Nanterre, diou leo euz Paris. He zad hag he mam a oa tud paour euz a vadou ar bed, met Doue en doa lakeat, en ho eneo, guiskamant kaer ar feiz hag

ar vertuziou, hag e savjont ho bugel hervez Doue. Jenovefa ne doa nemet seiz vloaz pa velaz en iliz daou zen Doue: sant Jermen, eskop Auxerre, ha sant Loup, eskop Troy. Bez' e oant ho daou en hent evit mont da Vreiz-Veur da lakat an heretiked skoliet gant Pelaj da zistrei divar hent ar gaou. Kristenien Nanterre a oa oll diredet da velet an eskibien santel, ha Jenovefa a oa gant he zad hag he mam e mesk ar bobl. Sant Jermen a zeuaz da gaout ar plac'hik, hag a lavaraz a vouez huel e vije Jenovefa, mignounez da Zoue hag eur zantez vru-det. Goulen a reaz diganti ha c'hoant e doa d'en em rei da zervich Doue; ar bugel a respountaz raktal: « N'em euz ken c'hoant nemet hennez ». Neuze ez ejont d'an iliz, hag e kreiz ar c'hanaouennou santel, sant Jermen a gonsakraz Jenovefa d'an Aotrou Doue.

En eur ziuall an denved, ar plac'hik a zonje e Doue. An env, an heol, al loar, ar stered a lavare d'ezhi galloud ha brasder Doue, hag an douar gant al loened, ar guez, ar bokedou a verke he vadelez. Goude maro he zad hag he mam, e teuaz da joum e Paris, kear benn ar vro, e ti he maeronez. An dud a anavezaz neuze e doa bet digant Doue ar galloud da ober burzudou, ha da ziskleria an amzer da zont. Diskuill a reaz da Bariziiz e tostea ar roue Attila, roue ar barbare hanvet Huns. Keariz straffillet ha spountet oll a vennaz savetei ho arc'hant ha te'het kuit, met Jenovefa a c'houlenmaz digant ho pedi ha iun, ha n'o defe drouk ebet. Senti a rejont outi: Attila a zeuaz e guirionez betek kear, met ne zaleaz ket pell da zistrei var he giz.

Divezatoe'h, an dud hanvet Frank a deuaz da lakat ar zeziz var gear Paris, ha var bouez ober brezel epad eur pennad amzer, e teujont a benn da gaout kear. Neuze e oue eur gernez vraz er vro. Jenovefa a iez da glask hed d'ar broiou pell, distrei a reaz gant unnek bagad hed, hag he lodenna a reaz etre an dud naounek.

Divar neuze, tud Paris n'o devoue nemet karantez evit Jenovefa e doa saveteat ho buez d'ezo diou vech.

Ar roue Klovis en doa ive eun doujanz vraz eviti.

Var ger Jenovefa e reaz sevel, e kear Baris, eun iliz kaer en honor d'an Ebestel sant Per ha sant Paol.

Met daoust ma oa doujet, karet ha meulet gant ar roue, an eskibien hag ar bobl, Jenovefa a stoue izel dirak an Aotrou Doue, o kredi ne oa nemet eur gristenez didalvez. Rak-se ne ehane da iun, da bedi, da ober vad bepred.

Oajet e oa a nao bloaz ha pevar-ugent pa rentaz da Zoue eun ene leun a veritou hag a zantelez.

He c'horf a oue douget gant kalz a lid hag a honor da iliz Sant-Per ha Sant-Paol, hanvet abaoue iliz santez Jenovefa, sklabezet hirio, siouaz! gant tud dizoue.

Difen ha savetei Paris e doa great epad he buez, kendele'her a reaz d'hen ober goude he maro. Rak-se pobl Paris he c'hemeraz da batrounez, outi ec'h en em erbedaz, bevech ma skoaz varnan eun darvoud benag.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Jenovefa o tiouall an derved a zave aliez he spered varzu Doue. Pa droe he daoulagad da zellet ouz an heol, al loar, ar stered renket ker brao en oabl, e sonje: labour Doue eo an envou, meuli a reont ar Mestr Oll-C'halloudek a zo dreist peb mestr all. Pa zelle ouz an douar, o velet al loened, ar bokedou ha pep tra great evit mad ha plijadur an den, e veule Providanz Doue, eienen peb madelez.

II. — Abalamour d'he vertuziou eo e oue brudet santez Jenovefa. Peurvua ne zere ket ouz ar Brinsed ober stad ouz eur vesaerez derved, met Jenovefa a oa doujet hag henoret ganto, abalamour ma oa eur zantez.

Pe seurt honor a renter hirio da veziou ar Brinsed hag ar rouaned en ho iliz e sant Denys? N'ho feder ket, e leac'h ma peder kalz santez Jenovefa. An dud n'int bras dirak Doue, nemet pa heullont hent ar vertuziou kristen hag ar zantelez.



AR PEVARE DEVEZ A VIZ GENVER

Anjela a Foligno, Plac'h Eüruz

(1245-1309)

Anjela, ganet e Foligno, tostik da Assis, en Itali, a oue plac'h ar bed en he iaouankiz. Karet a rea ar guiskamanchou brao, an ebatou; he femm a oa leun a avel. Dimezi a reaz abred, hag an Aotrou Doue a roaz d'ezhi kalz bugale.

Mont a rea da goves ha da gommunia ken aliez hag ar merc'hed all, uz he renk, met anzao a ra he-unan ne zisklerie ket he oll fec'hejou. Sant Aogustin a lavar var gement-se: « Arabat eo d'eoc'h kaout mez oc'h anzao ho pec'hed, bezit mez kentoc'h pa viot varnez he ober. » Anjela, pa iea da goves, a veze gounezet gant ar vez, a joume heb diskleria eur pec'hed braz, setu ma rea kovesionou ha kommunionou sakrilach. Diez e kave, aon e doa da veza skoet gant Doue, met choum a rea, evelato, dindan galloud an diaoul mud.

Doue, en he vadelez, en devoe truez outhi. Mont a reaz, eur vech, da gaout eur beleg ha ne oa ket ar c'ho-vesour ma oa boaz da vont gantan, anzao a c'hellaz d'ezan oll bee'hejou he buez, hag e santaz he c'hous-tians diveac'hiet: egiz pa vije bet tennet eur menez divarni. Divar an devez-se, ar c'hreg iaouank a deuaz da veza eur guir gristenez, guelloc'h kalz e kenver he fried hag he bugale.

Lenva a rea aliez d'he fec'hejou, o sonjal pegen tost e oa bet d'ezhi koueza en ifern, ha peger mad e oa bet an Aotrou Doue evithi. Evelato, ma roe Doue sklerijen d'ezhi da anaout guelloc'h grevusded he fec'hejou, na zaoure ket an oll eürusded a gav ar c'hristen e servich Doue: pinijen a rankaz da ober epad eun nebeut bloaveziou.

E leac'h koll kalon, ar bec'herez a boaniaz da anaout madelez an Aotrou Doue guelloc'h guella bemdez, da c'houlen pardoum euz he fec'hejou tremenet gant muioc'h mui a gontrision, ha Doue a reaz varni eur zell a drugarez. Bez' e devoue ar c'hras da velet, koulz lavaret atao, dirak daoulagad he spered, Hor Zalver Jesus-Christ stag ouz ar groaz, hag ar guel-ze a vage eur guir gontrision en he ene.

Ma poanie Anjela da gaout keuz ha glac'har d'he fec'hejou, ma klaske sonjal e Doue muioc'h mui bemdez, ar zonz euz he ene na vire ket outhi da gaout soursi euz he zi hag he zud. Tremena a rea diouz he fried, diskouez a rea doujans d'he mam, sevel a rea he bugale e karantez an Aotrou Doue.

Met Doue, abalamour m'en doa c'hoant sevel an hini a oa bet pec'herez vraz e renk he zervicherezed guella, a c'halvaz davitan, e berr amzer, mam ha pried Anjela, ha da c'houde, he bugale, hini hag hini.

Choumet he-unan var an douar, an intanvez santel a oue da Zoue parfetoc'h c'hoaz eget araok, hag a c'houlennaz digant Hor Zalver merka d'ezhi an hent a dlie heuil evit plijout d'ezhan penn da benn. Entent a reaz e tlie poania da veza henvel ouz Jesus var ar groaz, setu ne ehane da zonzjal er pec'hejou o doa toullet he zaouarn hag he dreid, ha digoret he gostez. An daelou a skuille Angela, o sonjal e Passion Hor Zalver, a oa ker bero, ma ranke evehou gualc'hi he boc'h gant dour fresk evit gellout choum beo da c'houzanv c'hoaz.

Ken aliez guech ha ma vele imach Hor Zalver stag ouz ar groaz, he c'halon a verve en he c'hreiz, hag an daelou a rede puill euz he daoulagad.

Mont a reaz neuze e Trede Urz Sant Fransez, evit beza muioc'h c'hoaz da Zoue.

Abalamour ma poanie an intanvez santel da zistaga krenn he c'halon euz an oll blijadureziou e doa karet er penn kenta euz he buez, Doue a laoskaz an droukspered da denti he zervicherez.

Poaniou a c'houzanve en he oll izili, en hevelep doare ma ranke choum var he guele, brevet he c'horf gant ar

skuizder. Peb hini euz he izili en doa he boan, dishenvel diouz poaniou an izili all, hag eur verzerenti e oa evithi choum eno, heb gellout finval an distera.

Ar pezh a rea ar muia poan da Anjela a oue an tentasionou spered e devoue da c'houzanv en amzer-ze.

Tentet e oue aliez eneb ar vertuz a burete, ha kaer e doa kas ar zonzjezonou hudur divar he spered, e teuent aliez en dro. N'e doa pec'hed ebet, pa 'z eo guir e kase ar zonzjezonou-ze kuit, guella ma c'helle, met diez e kave evelato.

Avechou e veze tentet eneb ar feiz, avechou all an diaoul a glaske rei d'ezhi da gredi e doa great pec'hejou ha n'e doa sonjet enno biskoaz araok, hag e choume nec'hamant var he spered, epad eun amzer.

Doue a zigolle anezhi, bep er mare, o rei d'ezhi, goude an tentasionou, sklerijen var mysteriou ar feiz, gant eun tanva euz eürusdet an eneoü glan er baradoz.

Mervel a eure, d'ar 4 a viz genver 1309, e Foligno: diskleriet eo bet Plac'h eüruz.

SONJOMP ERVAD :

Pegen treuzuz eo doare an den a zo laset he deod gant an diaoul mud! Ma ne gredit ket diskleria unan euz ho pec'hejou d'ho kovesour, en ho parrez, it d'ar retred, pe da bardouna d'eur japel brudet, hag anzavit hoc'h oll bec'hejou. Dalc'hit sonj e talc'h ar beleg plas an Aotrou Doue, er gador goves, hag e c'houzanvo kant maro kentoc'h eget diskleria da zen, hini euz ar pec'hejou a zo bet anzavet outhan.

AR PEMPED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Simeon Stylit

Buez ar zant-man a zo leun a draou dreist galloud an den, a draou ker souezuz ma tle beza he-unan kemeret evel eur burzud a c'hrasou Doue, ha nan evit eur skouer

da veza heuliet. Falvezet eo gant Doue diskouez petra a e'hell eun den da ober pa vez aketuz, evesiant da zenti ouz he vouez, ha skoret gant he c'hras. Buez ar zant-man a zo eur rebech evit an dud klouar d'he zervicha.

Simeon, ginidik euz ar Sirii, a dremenaz he amzer genta o tiouall al loenet, rak he dud a oa paour euz madou ar bed-man, met kristenien vad dreist. D'an oad a drizek vloaz, o veza klevet ar chomzou-man euz an Aviel: « Eürus ar re a vouel... » e c'houlennaz digant eun den oajet braz, ha kristen c'houek: « Petra » ententit-hu dre ar c'homzou-ze? » Hag an den mad ha respont: « Eürus ar re a deu da ouela d'ho fec'hejou, » hag a oar pedi. Eürus ar re a vo goasket er bed- » man. ar re a ra pinijen, hag a vev pell diouz trouz » ar bed, a zo boaz da zonzjal bemdez e Pasion hag e » maro Hor Zalver. » Heb choum da argila, Simeon a dec'haz dioc'h a douez an dud, hag a iez en eur gouent Goude beza bevet tri bloaz eno, an den iaouank a c'houlennaz konje da vont da veva he-unan, hag a reaz he zonzj da dremen ar c'horaiz hep dibri tam. Hen ober a reaz. D'ar zul Fask, e teuaz eur beleg d'he velet, hag er c'havaz ken dinerzet ma krede edo e riskl da vervel; he zakramanti a reaz, ha kerkent e rekouraz he oll nerz.

Divar neuze, ar zant a joumaz hed ar c'horaiz heb debri tam, ha Theodoret, ar skrivanier en deuz skrivet he vuez, a verk d'eomp en doa dija Simeon tremenet eiz koraiz var 'n ugent evel-se, d'ar mare ma skrive. Er mareou all euz ar bloaz, e tebre ken nebeut a dra, ma c'heller lavaret e veve euz ar gommunion zantel, a veze digaset d'ezan bep eiz dez.

Ar vrud euz he binijen a oue skignet dizale tro var dro, setu ma teuaz tud a bep leac'h d'he velet. An niver anezo a oa ker braz ma virent outan d'en em rei d'ar beden. Hag hen ha sonjal ober gant mein eur peul huel-huel: savet var he c'horre, e tremenaz eno meur a vloaz troet d'ar peder avel, devet gant an heol, ar groez; sklaset gant ar ienien, ar glao.

An doare-ze da veva a reaz d'eur c'halz tud c'hoarzin

ha goapât divar he goust. An ermitet euz an Ejipt zoken a deuaz d'he velet; ken etrezo e lavarent: « Red eo » ordren d'ezan abers an tad superior disken divar he » beul, ha distrei d'he gouent e mesk ar venec'h all. » Mar choum heb senti, eo anat assur, n'ema ket » spered Doue o talc'her anezan var he beul. Mar sent, » er c'hontrol, var an heur, heb digarezi, heb marc'hata, » n'eus douetans ebet, speret Doue eo a verk d'ezan he » blas eno. »

Eur manac'h a oue kaset d'he gaout, da lavaret d'ezan, a berz he Zuperior, disken... Kerkent ha ma klevas an urs, ar zant a c'houlennaz eur skeul evit merka sklear e oa prest da zenti var ar ger. An oll a anavezaz neuze e oa Simeon eno dre volontez an Aotrou Doue, hag e oue laosket da joum var he beul. Euz ar gadorze, e kinnige da Zoue he bedennou, he binijennou rust ha kalet; euz ar gadorze e prezege, diou pe deir guech bemdez.

Ar baianed, goude m'o deze guelet ha klevet an den santel, a zeue da c'houlenn ar vadisiant.


Petra benag ma rene eur vuez ker rust heb kaout distag ebet euz ar boan, he spered a joume atao seder, dous ha karantezuz. Kalz pec'herien a zistroe ouz Doue, goude beza guelet ha klevet he zervicher. Goude beza tremenet ouспен daou-ugent vloaz var ar pilier-ze, dinerzet dre eur binijen ken hir, leun a veritou, e rentaz he spered eürus da Zoue, var dro ar bloaz 462.

SONJOMP ERVAD :

I. — Pa zellomp ouz buez souezuz sant Simeon Stylit, eo eur skrij sonjal en defe herzet ouz eur binijen ken hir ha ker kalet. Peur e vezimp-ni souezet oc'h entent pegen laosk oump, prest atao da gila araok ar boan a gaver o servicha Doue?

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ A VIZ GENVER

Gouel ar Rouaned



An Iliz e deuz a viskoaz great ar gouel-man gant lidou-braz, rak da genver an deiz-man Jesus-Christ, bugel, en deuz galvet ar baianed da zont d'he anaout, d'hen adori.

Prestik goude ma oue ganet Hor Zalver e Bethleem, e oue guelec' er Zao-heol d'ar Judee, eur stereden dispar, kaer ha skeduz meurbed. Tri roue euz ar vro-ze, souezet o sellet ouz ar stereden nevez, hag a hent-all, sklerijennet a bers Doue, a deuaz da entent: « Ar stereden- » ze a dle beza an hini a zo bet merket gant ar prophet » Balaam, pa deuje var an douar ar bugel galvet da » zavetei ar bed oll. »

Kemeret a rejont heb dale ho zri hent ar Judee; er

vro-ze e tlie genel ar roue-nevez, a oa an oll boblou var c'hed anezan. Ar stereden ho henchaz.

Pa ouent digouezet tost da gear Jerusalem, ne veljont mui ar stereden, setu hag hi mont e kear da c'houlenn e pe leac'h edo ar roue nevez: « Guelet on deuz, emezo, » he stereden er zao-heol, ha deut oump d'he adori. »

Pa glevaz kement-se, ar roue Herodes a oue nec'het, ha keariz Jerusalem evel dan; aoun en doa na vije lamet he gurunen digantan. Gervel a reaz doktored al lezen, hag ho boda a reaz en he balez, da c'houlenn diganto e pe leac'h e tlie genel ar Messias. An doktored a respountaz dioc'htu: « E Bethleem, var douar Juda, evel » m'en deuz diskleriet Doue dre ar prophet Michee. »

Herodes en doa dija great he zonz da laza ar bugel, hag a lavaraz, heb diskouez netra, d'an tri roue: « It, » emezan, da Vethleem; eno eo ganet ar Messias; klas- » kit ar c'hrouadur, ha p'o pezo he gavet, deut d'hel » lavaret d'in evit ma c'hellin mont, me ive, d'he » adori. »

Var ar c'homzou-ze, ar rouaned a gemeraz hent Bethleem; kerkent ha ma ouent er meaz euz kear Jerusalem, e veljont adarre ar stereden dirazo: ho bleina a reaz var eün da Vethleem.

Laouen braz, an tri roue a heuliaz ar stereden, betek ma choumaz azioc'h al leac'h m'edo ennan ar Mabik Jesus, gant ar Vere'hez Vari, he vam, ha sant Joseph. En em strinka a rejont raktal d'an douar evit he adori.

Lakât a rejont dirak ar bugel an traou presiusa euz ho bro: aour, ezans ha myrrh; an aour, evit diskouez ee'h anavezent anezan evel ho roue; ezans, d'he adori evel ho Doue; myrrh, evit anzaou e oa guir den. Kenteliet gant eun eal, an tri roue a zistroaz d'ho bro dre eun hent all, heb mont var dro Herodes.

Eur vech distro, an tri roue a embannaz an traou burzuduz o doa guelet: bez o devoue eur maro eüruz.

Divezatoc'h, ho relegou a zo bet kaset, dioc'h ma leverer, da Gonstantinopl, hag erfin da Gologn, e leac'h m'ho mirer brema gant kals a respet.

Dalc'hit sonj euz a gement-man: da genver an deiz-se e oue galvet ar baianet d'ar feiz, da anaout Jesus-Christ, mab Doue. Trugarekait hoc'h-unan Doue da veza ho kalvet da anaout ar relijion gristen, ha choumit atao din euz ar c'hras kaer-ze, oc'h heuill an ali a roe an abostol sant Paol da dud Ephes: « Me ho ped stard, va » breudeur, da veva en hevelep doare, ma reizot ho » puez var zantelez Jesus-Christ, an hini en deuz roet » d'oc'h ar guir sklerijen. »

SONJOMP ERVAD :

Tri roue, o velet eur stereden burzuduz, a anavezaz dre sklerijen Doue e oa ganet Salver ar bed, ha ker buan en em lakejont en hent evit he adori. Pebez feiz! pebez sentidigez! Eur zonz vad abers Doue a zo eur stereden hag a sklerra hor spered d'her bleina varzu an env; bez' ez eo mouez Doue o komz ouzomp, ouz hor c'helen, ouz hor kelver, ouz hor gourdrous.

Pegeit amzer zo abaoe ma komz Doue ouzoc'h, m'ho kalv, m'ha klask, m'ho ped da guitât ar pec'hed, ha da rei d'Ezan ho kaloun? Ped stereden en deuz diskouezet d'ho taoulagad? Ha c'houi ne velit netra! C'houi ne jenchit ket buez! Hag evelse eo e senter ouz Doue?

Petra vije breman an tri roue-ze ma vijent choumet heb heuil ar stereden? Maro e vijent e tud difeiz. Ha c'houi, ma ne heuillit ket gras Doue, a zo o sklerijenna ho spered, o tomma ho kaloun, c'houi a zo e riskl braz da vervel en ho pec'hed.

Doue a dav goude beza komzet, en em denna a ra kuit goude beza skoet var dor ar galoun, disprijout a ra goude beza bet disprijet epad pell amzer. Ah! ene keaz, dilezet e vezi abalamour n'ec'h euz ket anavezet an amzer m'eo deut Doue d'az kuele!

O va Doue, anaout a ran ne doun ket c'hoaz dilezet, dre ma klevan ho mouez ouz va sponta, ouz va gourdrous. Re bell amzer zo abaoe m'edoc'h o skei var dor va c'halon; petra a c'houlennit-hu diganen-me? O va Doue! Komzit eur vech c'hoaz, ha me a zento.

de

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Aldrik, Eskop

(800-856)

Ar zant-man a zo ganet en Allemagn er bloaz 800. He dud a oa euz a ouen rouaned Frans, setu perak ar paotrik a oue kaset d'he zaouzek vloaz da lez ar roue Charlemagn. Eno Aldrik, bet savet gant eur vam devot, a oue skouer ar baotred all dre he aked d'al labour ha d'ar beden.

Pa oue pevarzek vloaz, e oue galvet gant Doue da zilezel ar bed evit en em rei oll d'ezan. Ar paotr na lavaraz ket dioc'htu kenavezo d'ar bed: aon en doa na vije touellet gant an drouk-spered. Kreski a reaz he bedennou hag he binijennou, en eur c'houlenn sklerijen digant Doue, hag a benn c'houec'h miz ez eaz da gaout ar roue: « Prins, emezan, tem e kavan ho kuitât, met » galvet oun gant Doue, den a iliz e rankan beza. » Ar roue a gimmigaz d'ezan an henoriou brasa ma karje choum gantan, met an dijentil iaouank a lavare atao: « Da Zoue e tlean mont. »

Ar roue a roaz d'ezan eul leve braz e kear Metz, met Aldrik ne gemeraz nemet eun nebeut hebken euz an danvez-se. Da Vetz eo ez eaz, eno e oa mistri gouizieg, hag ar skolaer iaouank a boaniaz da zelaou ho c'henteliou. Desket en doa dija ar peb brasa euz ar skianchou a dle eun den iaouank gouzout evit beva hervez he renk e lez ar rouaned; e Metz e teskaz skianchou Doue.

Eskop ar Mans o veza maro er bloaz 832, Aldrik a oue choazet evit ren an eskopti-ze. Resevet e oue gant ar brasa henor, ha lakât a reaz he boan evit guellât an traou e peb doare, e kear ar Mans hag en eskopti a bez.

Ar roue a zouge respet d'an hini en doa anavezet

bianik el lez, rei a rea d'ezan arc'hant ha leve, hag ar zant a ouie implija an arc'hant-se evit brasa mad he dud. Sevel a reaz ilizou kaer, kouenchou braz, maga a rea ar beorien hag an dud ezomek.

Doue a ziskouezaz eun devez pegement e plije d'ezan ar boan a gemere he zervicher da zével ilizou: pa oue great an dedi euz chapel sant Stephan, e kear ar Mans, eun den bouzar a rekouraz ar c'hleved; eun den all, mut betek neuze, a oue roet d'ezan ar prezeg; eun den dall put a velaz sklear.

Ar zant-man en devoue kalz trubuilhou, kalz poaniou da c'houzanv. Bugale-vian Charlemagn a reaz brezel an eil d'egile, hag a rea skrab en oll broiou a dreuzent.

Ar zant a rapare, guella ma c'helle, ar gaou a veze great ouz an dud; he garantez a rea d'ezan rei atao, rei heb ehan, d'ar re a oa dindannan.

Doue, evit kaerât he gurunen er baradoz, a zigasaz d'ar zant-man eur c'hlenved hag a badaz daou vloaz: seizet e oue he oll izili. Mervel a eure d'ar 7 a viz genver 856: renet en doa he eskopti epad pevar bloaz var 'n ugent.

Eleiz a viraklou a c'hoarvezaz var he vez; al levriou koz a verk e oue gulet eun oleo burzuduz o redet euz he arched, ha meur a zen klanv a oue pareet gant an oleo-ze.

SONJOMP ERVAD :

Da genta: ne stagomp ket re hor c'haloun ouz henoriou ar bed, ouz eazamanchou ar vuez-man. Aldrik, euz a ouen ar rouaned, savet e lez ar roue, a dlle beza aviet gant kals a dud; lavaret a dlent: « Hennez en dezo brud hag eürusdet » er bed-man. » Galvet eo gant Doue, ha kerkent ha m'en deuz anavezet eo Doue her galve e guirionez, e tro kein d'ar bed.

D'an eil: sikouromp kempen an ilizou, sikouromp an dud a iliz da veva. Klevet a reer, en hon amzer, meur a hini o lavaret: « D'ober petra rei arc'hant d'an iliz, d'an Aotrou 'n Eskop? » Ma ne deu ket ar gristenien da rapari an ilizou,

ar re-man a vezo laosket da goueza en ho foull, an eil goude eben. Ma ne roit guennek ebet d'an Aotrou 'n Eskop, penaoz e c'hello sevel ha skoazella oberou Doue? Sant Aldrik a reseve kalz arc'hant digant ar roue, abalamour m'oa mignoun d'ezan; an arc'hant-se a deuze etre he zaouarn, implijet e veze evit brasa mad oll gristenien an eskopti. Eun eskop a dle sikour sevel ilizou, presbitaliou, skoliou kristen, ar veleien, al leanezed ezomek, ar visionerien; euz a bep tu e c'houlenner digantan, penaoz e roio, ma ne vez ket sikouret?

AN EIZVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant MAUR, Abad

(512-584)

Ar zant-man a zo ganet e Roum, er bloaz 512: he dud a oa euz an noblans huella. Sant Beneat a oa neuze e Subiaco, demdost da Roum; kaset e oue d'ezan ar paotrik bian da zével ha da zeski. Daouzek vloaz e oa neuze.

Dindan eur mestr ker gouizieg ha ker santel ha ma oa sant Beneat, Maur a gerzaz buan var hent ar zantelez hag an deskadurez. Kaera vertuz a velet ennan a oue he zentidigez: ober a rea dioc'htu, ha laouen atao, kement a veze goure'hemennet d'ezan. Eur skouer e oa, hag hen iaouank c'hoaz, evit ar venec'h all.

Doue a ziskouezaz e plije d'ezan sentidigez he zervicher. Eur paotr, hanvet Placid, a gouezaz eun devez en eul lenn doun-doun: eat oa da gere'hat dour d'al lenn-ze. Placid ne ouie ket neun, edo var nez beza beuzet. Doue a ziskleriaz da zant Beneat e pe riskl edo Placid, hag an abad a reaz kerkent d'ar manac'h iaouank Maur, mont da zikour he Vreur. Maur, goude beza goulennet ha resevet bennoz an abad, a redaz prim d'al lenn, hag a valeaz var an dour ker buan ha ken dizoursi ha var ar c'haled. En em gavet e kichen ar c'hrouadur, Maur

a grogaz ennan dre he vleo, a dennaz anezan er meaz euz an dour, hag hen digasaz eaz var al letounen.

Neuze hebken Maur a deuaz d'en em zonzal; guelet a reaz en doa great eun dra vuzuduz, met lavaret a reaz gant humilite: « Va mestr, Beneat a zo ker santel, » ma ra Doue miraklou dre zourn ar re a zo sentuz » outan. »

Arabat eo kredi e choume Maur heb pinijen en amzerze: dougen a rea atao eur e'houriz reun, kouskat a rea var an douar noaz; epad an Asvent hag ar e'houraiz ne rea nemet daou bred er zizun. He vuez a oa eta kalet, ha n'eo ket souez en defe great miraklou.

Eun droiad, tud a zeuaz d'ar gouent gant eur paotrik mut ha kam; fizians o doa en defe sant Beneat roet ar pare d'ar e'hrouadur. Met ar zant ne oa ket er gear en devez-se. Neuze kerent ar e'hrouadur a lakeaz ho fizians er manac'h iaouank: « Pareit anezan, en han' Doue, » emezo. » Maur a hejaz he benn pa oue lakeat ar paotr dirazan: « Doue hebken a ra miraklou », emezan. Hag e troaz kein. Ar venec'h a oa eno a bedaz neuze anezan, hag a boaniaz kement varnan, asamblez gant kerent ar e'hrouadur, mac'h asantaz erfin lavaret eur beden evit pareans ar paour keaz mut-se.

Lakât a reaz eta he stol var benn ar paotr en eur lavaret gant fizians: « En hano an Drindet Santel, ha dre » veritou va mestr Beneat, savit iac'h var ho treid. » An hini klanv a zentaz kerent: pare klok e oa.

O veza deut er Franz var urz sant Beneat, sant Maur a reaz sevel eur gouent en eul leac'h hanvet Glanfeil, demdost da Anjers; reseo a reaz enni seiz-ugent manac'h. Ar zant a lakeaz eun urz kaer da ren etouez an oll: reolen sant Beneat a oue heuliet penn-da-benn; meritou ar venec'h a greske bemdez.

Goude beza servichet Doue epad meur a vloaz gant ar brasa devosion, sant Maur a anavezaz e oa deut he amzer da vont euz ar bed-man: goulen a reaz beza douget d'an iliz, eno e resevaz he zakramanchou diveza. Prestik goude e rentaz he ene da Zoue, er bloaz 584, d'an oad a zaouzek vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Maur a gerzaz var an dour evel var ar c'haled, evit savetei Plasid a oa varnez en em veuzi. Ar zant-man ne zonzje ket zoken e c'helle beza eur riskl benag evitan, mall en doa da ober ar pez a oa gourc'hemennet d'ezan, ha ne zonzje ket hirroc'h.

Peger kaer eo ar zentidigez a ra d'an den ober burzudou ker braz!

II. — Senti ouz ar superioed, pe ouz eun den fur a zo eur vad atao; senti ouz ar c'hovesour a zo eun dra red. Kement-se a zo guir, dreist oll evit an dud skorpuluz, ne c'helfent morse kaout peoc'h ebet, er meaz euz hent ar zentidigez. Stad an dud krignet ho c'houstians gant ar skorpul a zo trist ha truezuz; er stad-se ez aint da goll ma ne zentont ket ouz ho c'hovesour: senti a dleont outan abalamour ma komz en hano an Aotrou Doue.

AN NAVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Honore, marc'hadour

Ganet demdost da gear Châteauroux, eun tamik araok ar bloaz 1300, Honore a oue savet gant he dud e doujans hag e karantez Doue. He dad, marc'hadour loaned, a 'z ea da brena, var dro Poitiers, an ejenned a verze da c'houde er Berry.

Kerkent ha ma oue savet da baotr krem, Honore a heuliaz he dad er foariou, evit deski gantan ar vicher. An tad, den a skiant hag a urz, en doa dastumet eun nebeudik brao a arc'hant pa zeuaz ar maro d'he skei. Ar paotr a gendalc'haz da vale var he roudou.

Den eün en he lavarou hag he oberou, Honore a c'hounezaz kalz arc'hant; he c'hounidegez a veze atao rannet e diou loden. Eul loden evit he vam, da lavaret eo evit an tiegez; eul loden all evit ar paour. Arabat eo sonjal evelato e roe he arc'hant d'ar c'henta paour a gavje var he hent, heb sellet na da biou na pegement

rei, n'eo ket er giz-se e roe he aluzennou. An arc'hant a zo diez da c'hounit, poan a ranker kemeret, red e oa da Honore gouzout prena ha guerza, skiant a ziskoueze ive pa veze arc'hant da ranna: rei a rea da bep hini hervez he ezomou. Eirusa ma veze, eo pa c'helle argou-laoui priejou iaouank: he galoun a veze neuze bar gant al levenez.

An den iaouank a oue dizale anavezet dre ar vro oll: istimet e oa abalamour ma oa den a c'her ha n'en dije morse laeret eur guenneg divar goust he nesa; karet e oa abalamour d'he vadelez e kenver an dud paour ha dister.

Kaout a reaz fortunioù kaer, hag he vam he aliaz da zimezi, met n'en doa c'hoant ebet da vont e stad ar briedelez. He vam a gave diez guelet anezan o vont heb ehan euz eur foar d'eun all, euz an eil bro d'eben; met hen a 'z ea dispount ha dizoursi: miret a rea atao he ene e stad vad.

Eun devez Honore en doa da vont da eur foar a bell: daou-ugent leo a ranke da ober. Daou doucher en doa kemeret evit ober hent gantan, daou vreur brudet fall; eur vanden vad a ejenned hag a zaout o doa da ren. Ar vechourien a iea var ho foezik, rag hir e oa an hent d'eur vanden chatal korn; eur pardaez, an doucherien a bakaz eur vioc'h divar an hent braz, hag a lakeaz anezi etouez ho zaout. Pa zeuaz Honore da velet kement-se, e skandalaz an doucherien, hag e reaz da unan anezo mont var he giz da renta ar vioc'h d'he fere'hen. An doucherien a blegaz, red mad e oa d'ezo hen ober; met eur gasouni direiz a gemerjont ouz Honore, lavaret a rejont etrezo e oant e servich eur mestr hag a oa kalz re dost d'he goustians.

Anaout mad a reant ar mare'hadour, lavaret a reant:
 » Hon dalc'her a rajo betek ma vezimp distro d'ar
 » gear, da c'houde, n'on dezo tam labour ebet ken
 » digantan. Lazomp anezan; mar karomp, den ne ouezo
 » netra. » Prest goude, Honore a droaz divar an hent
 braz evit mont da eva en eur feunteun, ar re all a 'z eaz

var he lere'h, hag a lazaz anezan a daoliou kountel, d'ar mare ma plege evit kemeret dour.

Ar vuntrerien a oue tamallet hag a anzavaz ho zorfet.

Kement a viraklou a c'hoarvezaz var bez Honore, ma eo bet lakeat e renk ar zent, er bloaz 1444.

Savet e oue eun iliz el leac'h ma oa bet great an torfed, ha kalz tud a 'z ea da bardouna di, meur a zen klanv a gavaz ar pare e dour ar feunteun a oa eno; met er bloaz 1793, d'an dispac'h vraz, ar japel a oue diskaret, ha kerkent ar feunteun a zizec'haz.

SONJOMP ERVAD :

Stank eo hirio an dud a 'z a aneb al lealdet, ar justis, er foariou hag er marc'hajou; stank eo ive ar re a zo bet taolet en ifern evit atao, abalamour m'o d'euz great gaou ouz ho nesa. Klevet a reer lavaret avechou: ar baotred fin, an dud laer hebken a c'hell gounit arc'hant en hon amzer.

Skouer sant Honore a verk d'eomp sklear e c'hell eun den leal gounit he vara heb laerez, n'euz fors pe seurt micher en dezo: n'euz micher fall ebet. Grit implij euz ar skiant en deuz roet Doue d'eoc'h, baleit gant an hent eun atao, hag o pezo ho tam bara var an douar-man, da c'hortoz m'o pezo baradoz an Aotrou Doue er bed all.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Guillou, Arc'heskop

Ar zant-man a oa euz eur vouen dud a renk huel. En he iaouankiz e oa skouer an oll dud iaouank; rak-se e oue hanvet abred chaloni e Soissons, ha prest goude chaloni e Paris. A bep tu e kinniget d'ezan henoriou, met ober a reaz neuze he zonzj da guitât ar bed. En em denna a reaz e Grand-Mont, en eur gouent euz a Urz

sant Bernard, eno e teuaz buan da veza skouer ar venec'h. Pa lavare pe pa gleve an oferen, e rede an daelou euz he zaoulagad, abalamour m'en em zalc'he dirak an aoter, evel ma vije bet var ar menez Kalvar, test euz a varo Hor Zalver Jesus var ar Groaz: e'hoant en doa da zastum ar goad a zivere euz he gorf sakr. He galoun a vantre gant ar glac'har evit pec'hejou ar bed, devet e oa gant he garantez evit mab Doue.

Hanvet e oue da dad-abad e kouent Pontigny, da e'houde e Fontaine-Jean hag e Chalis; epad pemzek vloaz e tiskouezaz d'ar venec'h hent ar zantelez, e kement kouent ma choumaz. Er bloaz 1200, Arc'heskop Bourj o veza maro, e oue great pedemou dre oll ilizou an eskopti: sklerijen Doue a e'houlennet da anaout an hini guella da lakât en he blas, ha Doue a verkaz e tliet henvel Guillou: hanvet a oue gant an oll, en despet d'he vodesti.

Digemeret e oue e kreiz al levenez evel eun den digaset euz an env. Guillou a stagaz a galoun vad da viret oll deveriou he garg. Ober a reaz tro he eskopti; dre ma tremene e prezege d'an oll, e sakramante an dud klanv, e oa mad ouz ar beorien. Ren a rea eur vuez kalet, ober a rea pinijennou goasoc'h e'hoaz eget er gouent, « rak, emezan, bez' am euz da baea da Zoue » ouspenn ar boan am euz meritet dre va fec'hejou, ar » boan dleet ive da bec'hejou an eneou a zo em e'harg. » Daoust na oa arc'heskop, na zouge hanv-e'hoanv nemet he zae a vanac'h var gorre, eur gouriz reun a zindan; na zebre tam kig da bred ebet. Pleg he galoun he zouge da glask kompagnunez ar beorien, d'ho zikour, hag ive da gopsoli an dud klanv, da gemeret soursi ganto betek ho maro; hag aliës a vech e veze guelet an arc'heskop santel o kas, d'ar vered, korf ar paour. Skouer an eskibien e oa Guillou.

Na grene ket dirak an dud a renk huel. Philip-August, roue Frans, o veza taolet a gostez he vir bried Injelburj evit ober an neuz da zimezi gant Agnes de Merani, an arc'heskop Guillou a lavaraz d'ar roue heb damanti: « Non licet: Pec'hed oc'h euz. » Ha divar neuze ar zant

en devoa kalz da e'houzanv abers ar Roue, hag he offiserien. Met pa zistroaz ar Roue ennan he-unan, e reaz meuleudi an eskop santel.

Bez' en devoe ive tro da e'hourdrouz lod euz an dud a iliz, hag e tennaz neuze ho droulans varnan, met gouzanv a reaz peb tra gant kement a basianted, ha diskouez a reaz ker braz madelez d'ezo, ma teuaz a benn d'ho gounit oll, ha d'ho distrei var an hent mad.

Evelse e lakeaz an oll da blega d'ezan evel d'ho zad madelezuz, ne glaske nemet brasa mad ho eneou.

Da e'houel ar Rouaned, petra benag n'oa ket iac'h aoualc'h, an arc'heskop a zavaz er gador brezeg. En eur achui he brezegen, e lavaraz: « Kenavezo er baradoz » d'he vugale muia karet. Eur vech eat en he di e krenaz an dersienn vraz. Var he e'houlenn e oue lakeat var eur guele ludu, ha roet d'ezan he zakramanchou diveza.

Neuze, flamm he ene, e kinnigaz he boaniou a-unan gant poaniou Hor Zalver en he Basion, betek ma teuaz an elez d'he gere'hat, d'an dek a viz genver 1209.

Nao bloaz goude he varo, er bloaz 1218, e oue lakeat var an aoteriou gant ar Pab Honorius III.

SONJOMP ERVAD :

Evit beza sent deomp d'ar skol gant ar zent, kemeromp skouer varno koulz ha ma kemerent-hi skouer var Hor Zalver Jesus. Sant Guillou en deuz, e doug he vuez, heuliet bepred hent ar zantelez: den iaouank, chaloni, manac'h, arc'heskop, poania a reaz bepred da renta da Zoue oll deveriou he stad, ha da gaout an oll vertuziou. E peb stad e oa direbech, e oa eur skouer, e tiskoueze d'ar re all hent ar zilvidigez: na kaera, nag eürusa buez!

Poaniomp da veza evel dan servicherien fidel da Zoue. Na vanko ket d'eomp he c'hrasou er bed-man evit mont d'an eürused da viken.

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Theodos, Abad

Ar zant-man a deuaz er bed er C'happados. He dad hag he vam a roaz d'ezan skouer vad ha kelennadurez kristen, ha kement e plije da Dheodos lenn al levriou devot, ma rea fae var draou ar bed-man.

Ober a reaz ar zonz da guitât peb tra evit heuil ar c'henteliou roet gant Jesus d'an dud a fell d'ezo tizout betek an huella santelez, hag ober, suroc'h a-ze, ho zilvidigez. Kimiada a reaz diouz he gerent evit mont da bardouna da Jerusalem.

En eur vont dre ar Syri, e klevaz hano euz sant Simeon Stylit, a rea neuze eur binijen tenn meurbed. Theodos a iezas betek ennan, evit goulenn he vennoz. Simeon Stylit, dal m'her guelaz, her galvaz dre he hano, heb beza morse he velet. « Theodos, servicher » Doue, ra viot deuet mad! » Theodos, souezet oll, a stouaz d'an douar, met Simeon a lavaraz d'ezan e kave mad ar mennoz en devoa great en he galoun; ha bolontez Doue a oa ma kerzfe gant an hent-se. Rei a reaz d'ezan he vennoz da vont var araok.

Theodos a reaz he belerinach e Jeruzalem hag en Douar Zantel, hag a iezas da c'houde d'an desert. Eno ec'h en em roaz noz-deiz d'ar beden a galoun, komz a rea bepred ouz an Aotrou Doue, o sonjal en he berfeksionou dreist muzul, hag er mysteriou kaer diskleriet d'ar bed gant e Vab muia karet. Hag an Aotrou Doue a lakea da zisken, var galoun he vignon karantezuz, he c'hrason hag eun tam euz levenez ar baradoz: nag eüruz eo an neb a gar he Zoue !

D'ar mare-ze, an Aotrou Doue a c'halve kalz a dud da dremen ho buez er beden. Hogen brud Theodos o veza eat pell dre ar vro, an den santel-man a velaz dizale o tiredet davedan eun niver braz a dud a bep renk: tud chentil, offiserien, doktored ha re all; sentuz ouz

mouez Doue, e teuent oll da c'houlen digant Theodos ho ren var hent ar zantelez.

Abarz nêmeur e oue savet, e leac'h al lochen zister, eur gouent vraz meurbet, gwest da zigemeret mil manac'h. Er gouent-se ne oa ket urz da goms: didrouz e oa evel pa ne vije ket bet eur c'hristen enni.

Kenta tra a rea an Abad Theodos, d'an dud a c'houlenne he genteliou, a oa ho lakât da zonzjal da vad er maro evit trec'hi ho ioulou fall, hag ho dougen d'an oll vertuziou; ho zeod a joume eta mud, met en ho c'here'hen an ene a gomze ouz Doue evit gounit ar vuez eternal.

Theodos a roe ive digemer vad en he gouent d'ar beorien, d'ar re a veze bet o pardouna en Douar Zantel, d'an dud klanv; rei a rea d'an oll, peb hini en deze he lod digantan. Eur burzud eo en defe gellet Theodos pourvei da ezomou kement all a dud; ha ken burzuduz all e oa he velet evel eun tad leun a furnez hag a zousder, o ren ar gouent niveruz-se, e kreiz ar brasa peoc'h hag an tenera karantez. Choum a reaz tad-Abad betek he varo. En tregont vloaz diveza euz he amzer ne veve nemet divar griziuou louzou, ha goulskoude ez eaz betek an oad a c'houec'h ugent vloaz. He varo eüruz a erruaz er bloaz 529.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Theodos a zo bet savet hervez Doue: netra ne dal kement evit silvidigez an den eged rei d'ezan a-vihanik eur gelennadurez kristen; an had santel-ze, taolet e kalon ar bugel, a ra griziuou doun, ha guezen ar feiz a jom er galoun-ze keit hag ar vuez.

Bugale gristen! na c'houi a dle renta mil bennoz da Zoue, dre mac'h euz bet eun tad hag eur vam hag a fell d'ezo goude beza roet d'eoc'h ar vuez-man, ho kas d'ar vuez eternal! Oll vadou ar bed-man a zo nebeut a dra e kichen an eürusted on euz da gaout da viken e baradoz an Aotrou Doue. Ar feiz eta eo guella tenzor an den er bed-man, rak heb he sklerijen n'hellomp ket mont d'an eürusted-se.

Met er c'hontrol, an tadou hag ar mammou ne roont ket d'ho bugale eur gelennadurez kristen a zo digaloun; ne reont ket a fors ha pa ne iafe ket ho bugale d'ar baradoz; ne reont netra evit miret outo da vont d'an ifern.

AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant BENEAT BISKOP

Ar zant-man, ganet e Bro-Zaoz, a oue savet mad gant he dud, o doa sonj ober anezan eur brezeller braz. Kaset e oue da lez unan euz a rouaned Bro-Zaoz, eno e oue great offiser, hag o veza ma oa dispount en emgannou, e teuz da veza brudet hag henoret.

D'he bemp bloaz var 'n ugent e klevas mouez Doue e goeled he goustians: « N'out ket great evit choum e » mesk soudardet eur roue, galvet out da veza soudard » Jesus-Christ. » Senti a reaz kerkent, ha gant aon ne vije bet tenerreat gant he vignoned, o dije klasket ober d'ezan mont var he giz, ez eaz raktal da bardouna da Roum.

He zevosion a greskaz kalz er gear zantel-ze: pedi a reaz el leac'hion a oa bet ruziet gant goad ken aliez a verzer, pokat a reaz da relegou brasa mignoned an Aotrou Doue, gaelet ha selaou a reaz ar Pab, vikel Jesus-Christ var an douar.

Studia a reaz da c'houde ar Skritur Zakr epad pemp pe c'houec'h vloaz, evit entana muioc'h-mui he galoun gant karantez Doue, ha beza guest da sklerijenna ar re all var ar virionez. Neuze e kemeraz guiskamant ar venec'h en eur gouent euz ar Frans: eno e teuz da veza heb dale eur skouer evit ar venec'h all, dre he humilite hag he binijennou.

Distrei a reaz a benn daou vloaz da Roum, gant ar zonzj da joun eno betek he varo, met ar Pab Vitalien a aliaz anezan da vont en dro da Vro-Zaoz: « Eno, emezan, » ema an dachen labour merket d'eoec'h gant Doue. » Bian eo c'hoaz ar feiz e Bro-Zaoz, it, ha sklerijennit » guelloc'h ho preudeur. » Senti a reaz.

Lakeat e oue da zuperior e kouent vraz Kantorbery;

met rannet e oue he galoun, pa velaz pegen dibarfet e oa eur c'halz euz ar venec'h. Ho c'helen a reaz muioc'h dre he skoueriou eged dre he gomzou, hag heb dale, e oue gaelet an devosion o ren er gouent. Choum a reaz eur pennad eno, met ar c'hoant da anaout guelloc'h he zeveriou a reaz d'ar zant distrei da Roum eur vech all c'hoaz.

Goude beza pedet c'houek var beziou an ebestel sant Per ha sant Paol, goude beza great he zevosionou en ilizou santella euz kear, Beneat a ieaz euz an eil gouent d'eben en Itali, da c'houlen digant ar venec'h devota, an doare d'en em zantellât he-unan, ha da ren parfetc'h he gouent e Bro-Zaoz.

Pa oue distro d'ar gear, e savaz kouenchou nevez, kelen a reaz he venec'h gant furnez eun doktor ha tene-redigez eun tad; diskleria a c'helle d'ezo kement tra a gaer, a zantel en doa gaelet pe zesket en he veachou. Poania a reaz da ober d'he veleien oferenna gant ar brasa devosion: guiska a rea an ilizou, pinvidika ma c'helle; deski a reaz d'he dud kana evel m'her great e Roum. Ilizou Bro-Zaoz a oa fall ha dister, ober a reaz sevel ilizou kaeroc'h, gervel a reaz euz ar Frans hag euz an Itali artisaned gouizieg evit ma vije guer a liou var an ilizou, taolennou santel oc'h ar mogerioù: eaz e oa d'an dud sonjal e Doue, ha pedi en ilizou-ze. Evit kreski c'hoaz devosion he venec'h, en doa goulennet ha bet digant ar Pab relegou merzerien. Ober a reaz d'he dud renta d'ar relegou-ze an oll henorioù.

Ar zant-man a oa bet skouer he oll venec'h dre he aked da viret reolen he Urz, dre he humilite, he binijennou, he garantez evit Doue hag he nesa; met er penn diveza euz he vuez e oue evito eur skouer a basianted, evel m'eo bet an den santel Job. Choum a reaz var he vele epad tri bloaz, goasket gant eur c'hlenved iud, heb ma oue klevet biskoaz o laoskel an distera klemmaden.

Eun devez, goude beza roet d'he Vreudeur he aliou diveza, e resevaz he zakramanchou, hag e rentaz he ene eüruz d'he Grouer, d'an 12 a viz genver 690; bez' e oa var dro 80 vloaz.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar zant-man a studiaz ar Skritur Zakr epad pemp bloaz, evit anaout mad lezen Doue; nag a bed den en hon amzer, goude beza desket ho c'hatekiz epad m'edont var ho faskou etouez ar vugale, ne glaskont ket da c'houde anaout ho relijion. Darn euz ar gristenien a zo kalz re lezi-reg hirio da zeski guirioneziou ar feiz.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Honorat, Arc'heskop

Ar zant-man a zo ganet e Bro-C'hall; he dud a oa pinvidik braz, met paianed.

Iaouank c'hoaz, Honorat a anavezaz guirionez ar relijion gristen; poania a reaz da zeski he gatekiz evit gelout reseo ar vadiziant. He dud a enebaz outan; ar vistri gouizieg, met paian, a rea skol d'ar c'hrouadur, a glaskaz ober d'ezan adori idolou Roum; met ar paotr a zalc'he stard: reseo a reaz ar vadiziant.

Eur vech kristen, Honorat en em roaz da vad d'an oberou a zevosion; he dad, evit kaeat outan, a glaskaz he douella gant falz plijadureziou ar bed. Ober a reaz d'he vab mont gantan da chaseal, da neün, d'an oll ebatoù a gar an dud pinvidik e kear; koll a reaz he boan. An den iaouank, sentuz ouz he dad, met kennerzet gant gras ar vadiziant, a lavare: « Buez tud ar bed a zo plijaduruz, met noazuz eo ive. »

Sonjal a rea c'hoaz: « Lezennoù Doue a zo eneb gizioù ar bed, na c'heller ket servicha an daou vestr-ze » asamblez: trei a ranker tu pe du. An henoriou a zo » vean; evach ar blijadur en deuz eun distag c'houero; » an aour a ro eur pennadik falz eürusdet, met tregas » a ro ive: e Doue hebken e kaver ar guir beoc'h. Nij, » va ene, dreist oll traouachou ar bed-man: va men- » noz, er vuez, a vezo gounit ar baradoz; va fried a

» vezo ar furnez; va flijadur, ar vertuz; va zenzor, Jesus-Christ. »

Ha gant aon na vije trec'het gant he dud hag ar bed, an den iaouank a reaz pinijen, a iunaz aliez, a reaz fae var an dillad kaer, a jomaz pelloc'h da bedi en iliz. An tad a rankaz anzae eun devez: « Honorat a zo kollet » evidon, hag evit plijadureziou ar bed. »

Mestr, divar neuze, da ren he vuez evel ma karje, an den iaouank en em dennaz e leac'hiou distro evit beva he-unan gant Doue, pell dioc'h an dud.

Pella ma chomaz eo e Lerins, eun enezen vian demdost da Gann, er mor Mediterranee; eno e savaz eun ermitach evitan hag evit eun den santel all en doa karget d'he ren. Dont a reaz kalz tud da zeski gantan skiant ar zent, setu e oue red sevel eur gouent vraz en enezen. Diez e oa kaout dour, met ar zant a reaz eur beden kalounek da Zoue, ha kerkent e sinklaz euz ar roc'h eun eienen grenv; aered bilimuz a oa en enezen: tec'het a rejont oll.

Kouent Lerins a deuaz a nebeudou da veza brudet: roet e deuz d'an Iliz ha d'an env, gant an amzer: pempmerzer ha kant, pevar eskop var 'n ugent, ha dek abad, henoret oll evel sent.

Ar Zant a c'houarnaz ar gouent epad pemp bloaz ha tregont: peoc'h ar baradoz a renaz etouez he venec'h, hed an amzer a dremenaz ganto. Arc'heskop Arl o veza maro, Honorat eo a oue choazet evit kemeret he blas, setu ma oue red d'ezan lavaret kenavezo d'he gouent.

Ren a reaz he eskopti gant kalz a furnez, maga a reaz, dre he genteliou hag he skoueriou santel, an eneou a oa fiziet ennan, met diskaret e oue buan gant ar c'hlenved.

An arc'heskop santel, goude beza resevet he zakramanchou diveza gant devosion, a dremenaz er bloaz 429: renet en doa he eskopti epad tri bloaz hebken.

SONJOMP ERVAD :

N'eo ket aoualc'h d'comp lavaret: « Kaer eo buez ar zent »; red eo d'comp poania da heuil ar skoueriou o deuz roet. Ar skoueriou mad a zo eur brezegen dalvoudek, rak pa vez

hano euz ar vuez dleomp da ren, an den a zesk gant he zaoulagad kalz buanoc'h eget na ra gant he ziouskouarn. Sellit ouz ar c'hrouadurik: ne oar ket komz c'hoas, ha dija en deus c'hoant da zikour he vam da skuba an ti, c'hoant da ober eun tamik labour er park, evel he dad. Ha ma tesker abred heuil eur skouer vad, e tesker buannoc'h hag easoc'h c'hoaz heuil ar skouer fall. Bezit eta var evez dirak ar re iaouank: ho parnedigez a vezo spountuz, m'oc'h euz roet skouer fall d'ezo.

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

SANT HILER, ESKOP

Ar zant-man a deuz er bed en eur gearik e kichen Poitiers. He dad hag he vam a oa paianed a renk huel. He gas a rejont d'ar skol gant mistri gouizieg, hag e teuz da veza desket braz var skianchou ar bed-man. Evit peurachui he studi, ez eaz da skoliou Roum hag Athen, epad dek vloaz: da c'houde, e teuz da vestr skol da Boitiers. An doktor, gant he skiant braz, a vele peger berr eo skianchou ar bed-man. Eun deiz, ec'h en em lakeaz da lenn ar Skritur Zantel, ha dre ma lenne, sklerijen Doue a lakea ar virionez da bara sklear en he spered. Hiler a c'houlennaz ar vadiziant, hag en em roaz a-zevri da zeski guirioneziou ar relijion gristen.

Pa varvaz eskop Poitiers, Hiler a oa dija ker brudet, ma oue hanvet gant an oll da eskop, ha-red e oue d'ezan asanti.

Ar garg a eskop a oa tenn d'ar mare-ze, rak an heretiked hanvet Arianed, a ziskolpe tam ha tam levr ar relijion gristen. Konstans, impalaer Konstantinopl, a oa arian he-uman, ha lakât a rea he oll c'halloud, dre gaer ha dre nerz, dre douellerez ha dre c'hourdrouzou evit dougen ar pab, an eskibien hag an Iliz a bez da nac'h eo Jesus guir vab Doue. Kas a reaz d'an harlu, da lavaret eo, er meaz euz ar vro, an Tad Santel ar Pab hag eur maread eskibien.

Hiler, deut da veza eskop Poitiers, en em lakeaz neuze da zere'hel penn d'an heretiked-se. Ar virionez a oa gantan, ha sevel a reaz he vouez dispount evit difen ar guir relijion. Dre bevar c'horn ar bed e klevchor neuze lenn liziri Hiler: o tamall an impalaer braz da veza gaouiad ha iud, o lavaret da eskibien Frans beza start a dû gant guir kenteliou Hor Zalver, o tizoloi gevier an heretiked. An impalaer Konstans, kounnaret, a zougaz enep d'ezan setans an harlu, hag eskop Poitiers a oue kaset er meaz euz Bro Frans, d'ar Phryji, er Zao-Heol. An impalaer, en he grisder, a grede, dre an taol fall-ze, terri nerz kalon Hiler, ha dont easoc'h a-ze a benn da drei ar gristenien gant an herezi. Fazia a reaz. An doktor kalounek ne reaz van evit beza goall gaset evel an ebestel hag ar verzerien, abalamour d'he feiz ha d'he garantez evit Mab Doue; kendele'her a reaz da zifen ar virionez. Skriva a reaz daouzek kentel var myster an Drinded, sklerijen a roe da Eskibien ar bed oll, lakât a rea ar virionez d'en em skigna muioe'h mui.

Liziri a gase ive d'he eskopti, ha da oll gristenien Frans: ne skuize ket o labourat evit ar guir feiz, evit an Aotrou Doue.

E konsil Seleusi, Hiler a zifaziaz an heretiked. Skriva a reaz ive d'an impalaer e oa prest da vont dirazan da respount da vella doktored an herezi, met ar re-man a ouie ne oant ket goest da zislavaret anezan, hag e rojont ali d'an impalaer d'he zigas en dro da Boitiers: epad pemp bloaz e oa bet en harlu.

Dre gement kear ma tremene Hiler, en he zistro d'ar gear, e oue digemeret gant henor ha meuleudi. Pa zeuz da vro Frans, an oll a zirede da zaludi an doktor dispount. En eskopti Poitiers dreist-oll, he bobl a dridaz gant foug o velet a nevez he eskop muia karet, en doa trec'het an oll heretiked.

Doue a roaz neuze da zant Hiler ar galloud da ober burzudou: divar neuze e choumaz en he eskopti. Skriva a reaz levriou a gefennadurez kristen, ha levriou evit lakât ar guir feiz da veza digemesk dre an Iliz a bez.

D'an oad a zeiz vloaz ha tri-ugent e varvaz leun a veritou, d'an 13 a viz genver, er bloaz 368.

Hon Tad Santel ar Pab Pi IX en deuz roet d'ezan an hano a zoktor euz an Iliz.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Hiler o lenn ar Skritur Zantel a gavaz skiant ar zantelez. Nag a bed a zoug an hano a gristen, hag a dremen ho amzer o lenn kazetennou, levriou, soniou skanv aliez, brein avechou: ar galoun leun gant an traou-ze, a zo divalo ha donjeruz. Evidomp-ni, miromp neat hor c'horf hag hon ene, o tiouall mad euz al louzdoni. Al levriou santel eo a dleomp da lenn evel ar zent, o saouri eveldo an traou pur ha santel, evit beza sent eun deiz.

II. — Sant Hiler en deuz labouret kalz evit ober daouzek kentel var myster an Drindet, ha rei d'an dud eur sklerijen benag var ar myster dudiuz-se. Ha c'houi, petra a boan a gemerit-hu, evit anaout kelennadurez an Iliz divarbenn ar mysteriou, hag ho displega d'ar re all?

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Paol, kenta Ermit

(229-342)

En amzer m'en em lakeaz an impalaer Des da ober brezel d'ar gristenien, Paol, evit miret he vuez, en em dennaz e dezert an Thebaid. Eno, e kreiz ar peoc'h, ec'h en em blije o pedi an Aotrou Doue.

N'en doa nemet daou vloaz var 'n ugent, ha n'en doa ken sonj nemet gortoz ma vije tremenet kounnar ar baianed, evit distrei adarre e touez an dud. Met Doue en devoa eur mennoz all. Paol, o veza eat doun en dezert, a gavaz eur gleuzen; eur vezen balmez a zave he skourrou evel eun doen aziouti, hag eur feunteun a oa e kichen: eno e choumaz.

Goude eun nebeut deizioù, e sonjaz e oa bet renet betek eno gant Doue he-unan, rak n'en defe ket gellet kaout leac'h all ebet da blijout d'ezan kement, hag e reaz he zonz da jom atao eno: er feunteun e kave dour da eva, er vezen balmez e kave delliou d'en em viska ha frouez d'en em vaga. Kement-se a oa peadra aoualc'h d'ezan da veva; beteg an oad a dri bloaz ha daou ugent n'en devoe ezom euz netra all ouspenn.

N'en doa ken sonj nemet adori Doue ha sevel he spe-red sklerijemet gant ar feiz, da veuli muioc'h-mui he berfekcionou kaer meurbet. An Aotrou Doue, evit diskouez joa d'he vignoun, a reaz neuze d'eur vran digas d'ezan bemdez eun hanter-dorzik vara, evel guechall d'ar prophet Eli; an ermit santel a velaz ar burzud-se bemdez, azalek he 43 bloaz betek fin he vuez.

Paol en devoa trizek vloaz ha kant pa gasaz Doue betek ennan an ermit santel Anton. Pep hini euz an daou zant a reaz he hano euz egile, heb m'o defe en em velet biskoaz araok. Neuze, azezet e kichen ar feunteun, e kaozeant euz ar vuez eternal, pa zeuaz ar vran da lakât dirazo eun dorzik vara en he fez. « Meulomp ma- » delez Doue, eme zant Paol, bemdez e tigas d'in eun » hanter bara, met hirio e tigas d'in eur bara en he bez, evidomp hon daou. »

Goude beza trugarekeat Providans an Aotrou Doue, e febrjont ar bara-ze, hag e tremenjont an noz o pedi.

Da c'houlou-deiz, sant Paol a lavaraz da zant Anton: » N'em euz mui pell da veva, it mar plij, da glask » ar vantel roet d'eoc'h gant sant Athanas; hi a zervi- » cho d'am zebelia. »

Sant Anton a gimiadaz diouz sant Paol en eur skuill daelou. Pa zistroaz d'he gouent, e lavaraz d'he ziskibien: « Me ne doun, siouaz! nemet eur pec'her! Rak bez' » em euz bet ar c'hras da velet ar prophet Eli; sant » Ian-Vadezour oun bet o velet en dezert! » Hag e kemeraz ar vantel en doa bet digant sant Athanas, evit he digas da zant Paol.

Edo en hent, pa velaz, en huel, e kreiz eur sklerijen burzuduz, ene sant Paol e touez eur maread elez o pignat da c'hloar ar baradoz. Dioc'htu sant Anton a

gouezaz d'an douar, beuzet en he zaelou, hag ee'h huanadaz: « Va zad karet, perak va dilezit-hu? ken » nebeut amzer a zo m'oc'h anavezad, hag eo red dija » dispartia! » O veza deut beteg kleuzen sant Paol, e kavaz he gorf, maro, daoulinet. Lakât a reaz d'ezan ar vantel en devoa digaset, hag e lavaraz psalmou an anaoun. Da c'houde e oa nec'het o klask penaoz ober eun toull en douar, rak n'en doa benvek ebet gantan, pa velaz daou leon o tiredet: lipat a rejont korf maro an ermit santel, ha gant ho skilfou e rejont evitan eun toull en douar. Sant Anton, goude m'en devoe enterret ar relegou-ze, a gasaz gantan ar zae en doa great sant Paol gant deliou palmez. He dougen a rea evel eur viskamant a briz braz, da c'houeliou Pask ha Pantekost.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar bersekusion a reaz da zant Paol tec'het kuit euz a douez an dud, evit mont d'an dezert da guzat. Eno e kavaz ar peoc'h hag ar zilvidigez. Ar re a glaske hel lakât d'ar maro, a reaz d'ezan kaout ar guir vuez. Pa vez goallgaset eun den abalamour d'he feiz, kement-se a zigouez, peurliesad, evit brasa mad he ene .

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

SANT MARSEL, PAB HA MERZER

Sant Marsel en doa labouret kalz evit gloar an Aotrou Doue ha brasa mad an Iliz, pa oue hanvet da Bab, goude merzerenti sant Marsellin, d'an unan var 'n ugent a viz mae, er bloaz 304. Seulvui ma rede goad ar verzerien, seulvui e kreske niver ar gristenien, rak-se ar Pab Marsel a zavaz pemp parrez var 'n ugent e kear Roum, evit ma vije easoc'h d'an oll geariz dont da zelaou ofisou an Iliz, ha da reseo ar zakramanchou.

Goulen a reaz ive douar digant eun itroun binvidik euz kear, hanvet Priscill; ha lakât a reaz kleuza dindan an douar-ze eul leac'h kuz, evit ma c'helfe ar gristenien dont eno d'an ofisou, heb ma teufe ar baianed da viret outo da adori Doue, ha da lakât ho dourn divalo var an traou sakr. Eno ive e c'hellet kuzat korfou ar verzerien, ha renta honor d'ezo.

Er bloaz 306, lod euz soudardet rouantelez Roum a hanvaz ho c'habiten Maxans da impalaer, met lod all a oa troet gant Galerius; red e oa eta ober brezel, ha Maxans en devoe neuze aoualc'h da ober o stourm outo; rak-se n'en devoa ket a amzer da zonzjal merzeria ar gristenien.

Epad ma renaz ar peoc'h, ar Pab Marsel, pastor karantezuz, a eveseaz mad ouz peb tra, hag a lakeaz urz e pep leac'h. Met kerkent ha ma teuz Maxans da veza treac'h d'he enebourien, ee'h en em daolaz goasa ma c'hellaz da ober brezel d'an Iliz. Ar Pab Marsel a oue paket gant ar re genta: skourjezet e oue a daoliou fouet, ha lakeat da ober paotr marchosi e kreiz kear Roum.

Pebez dismeganz! ar Pab, vikel mab Doue, tad ar gristenien, porzier ar Baradoz, lakeat da zoursial ouz loened mud! Met en eur stad ker mezuz, ene ar Pab santel a zave varzu mab Doue, diskennet ive, eun deiz, euz gloar ar baradoz e kraou Bethleem, etre eun azen hag eun ejen, hag e rente a greiz kaloun mil bennoz da Zoue. Ar gristenien a zeue betek an Tad santel er marchosi, ha pa velent he basianted hag he humilite, e veulent madelez an Aotrou Doue.

Abenn nao miz, Marsel a gavaz an tu da dec'het kuit. Eun intañvez devot hanvet Lusina, a oue foug enni o tigemeret en he zi an Tad Santel ar Pab; eno e choumaz da guzat, hag eleiz a gristenien a zeue betek ennan. Abarz nemeur, Lusina a lavaraz d'ar Pab santel ober eun iliz euz he zi: he gonsakri a reaz. En iliz-man e lavare bemdez an oferen, hag e katekize an dud. Met kement-se a zeuz da veza brudet: hag ar Pab Marsel a oue diskuillet. Neuze, an impalaer Maxans a reaz eur

marchosi euz ti an intañvez, deut da veza iliz Sant-Marsel, hag ar Pab a oue lakeat adarre da zoursial euz al loened. Plega a reaz a volonte vad d'ar boan ha d'an dismegans, met frailla reaz he galoun o velet an iliz-se, e leac'h m'en devoa lakeat he Zoue da zisken var an aoter, deut da veza eur c'hraou leun a louzdoni. Ar boan-man a oue re bounner d'he galoun, hag en eun taol e kollaz ar iec'hed; ar mevelien all, paianed oll, a voallgase anezan, hag a rea d'ezan bep seurt iudazerez; met abarz nemeur a amzer, Doue her galvaz d'ar baradoz, d'ar 16 a viz genver 310.

Tri bloaz goude, Konstantin, o tougen banniel ar groaz, a dree'haz Maxans hag he oll enebourien all, hag a roaz frankiz d'ar gristenien.

SONJOMP ERVAD :

Sant Marsel a zavaz pemp parrez var 'n ugent e kear Roum. An Iliz e deuz skignet atao eleiz a barrezioù dre ar bed oll, evit ma c'hello peb kristen dont d'he iliz parrez d'an ofisour, da reseo ar zakramanchou, da glevet komzou Doue. Peb kristen en deuz an dever da zont d'he iliz parrez evit kement-se. En hoc'h iliz parrez eo oc'h bet great kristenien dre zakramant ar vadiziant; enni c'hoaz oc'h euz guir da c'houlen ar zakramanchou, pe c'houi zo iac'h, pe c'houi zo klanv; enni emma ho pastor hag enn deuz e koustianz karg ac'hanoc'h aberz Doue, hag aberz an Iliz. It eta d'hoc'h iliz parrez, kentoc'h eget d'eun iliz all, pa vezo eaz d'eoc'h, rak eno e peus peb guir da gaout grasou Doue.

En hoc'h iliz parrez e vezo kaset ho korf maro evit pedenou an anaon; enni eta Doue a verk d'eoc'h ho plas: arabat eo d'eoc'h he lezel goulo.



AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

SANT ANTON. ABAD

(250-355)

Ar zant-man a deuaz er bed en Ejipt. Iaouank e oa c'hoaz pa gollaz he dad hag he vam, hag e choumaz he-unan gant eur c'hoar iaouankoc'h egetan.

Braz oa he zanvez. D'he ugent vloaz, Anton a oa en iliz o selaou lenn an Aviel, pa glevaz ar c'homzou-man lavaret guechall gant Hor Zalver d'eun den iaouank pinvidik: « Mar fell d'eoc'h plijout da Zoue, kit, guerzit » ho tanvez ha rannit an arc'hant etre ar beorien. » Sonjal a reaz e lavare Doue ar c'homzou-ze d'ezan, hag ez eaz raktal da verza he beadra, lakât a reaz he c'hoar en eur gouent, hag ee'h en em dennaz he-unan en dezert evit soursial euz he ene.

Eno, var bouez poania ha pedi, e teuaz a benn da gaout eur galoun leun a vertuzioù, a basianted, a zousser, a drugarez, a humilite. Aketus e oa da lenn ar Skritur Zantel, beilla rea var he skianchou ha var he galoun, bez' e oa atao var evez evit ho reiza hervez Doue.

An drouk-spered hel lakeaz da stourm, rak bez' e veze heb ehan var he dro, o klask he douella, he zougen d'an drouk, ober d'ezan distrei adarre d'ar bed. Anton en doa beveh ar gounid dre ar iun, ar beden, ha sin ar groaz.

Eun deiz, an den santel en em glemme eun tammik da Jesus: « Va Doue, va Aotrou, emezan, e pe leac'h » edoc'h-hu, e keit ha ma oa an drouk-sperejou koun- » naret o sailla varnon evit va diskar? » Klevet a reaz kercent eur vouez o respount d'ezan: « Anton, bez e » qan en da gichen, da velet am euz o stourm kalou- » nek. Bez sur e roin skoazel d'id betek da varo, evit » beza trec'h d'az enebourien. »

Anton evit pellât muioc'h-mui euz ar bed, en em dennaz var eur menez huel. Eno, epad ugent vloaz, e tale'haz penn d'an drouk-sperejou. N'em em blije nemet o sonjal e perfeksionou Doue: ne c'hoantea nemet ren eur vuez kuzet. Hogen, eleiz a dud a deue da c'houlen sklerijen digantan, hag an den santel ne leze nikun da vont kuit heb rei d'ezan eur respount, o lakât er c'halonou eun nebeut euz ar garantez en doa evit Doue. Hag evelse he vrud en em skigne muioc'h mui bemdez, en doare ma teuaz eun niver braz a dud da c'houlen digantan ho ren var hent ar zantelez. Sevel a rankaz kouenchou tro var dro, menez'h a vilierou a oa dindannan. Sant Anton a roaz d'ezo kenteliou ar furnez hag ar zantelez, hag ho dougen a reaz da renta ho ene kaeroc'h-kaera bepred.

An impalaer Konstantin hag he zaou vab var he lere'h, a skrive d'ezan evit en em erbedi ouz he beden-nou, ha goulen he genteliou. Hag o velet kement all, diskibien ar Zant a oa foug enno: « Oh! emezan, kaout eul » lizer digant an impalaer a zo nebeut a dra, ne deo » nemet eun den o skriva d'eun den all, met eun dra » burzduz eo guelel Mab Doue, deut da lakât skriva- » nierien da ziskleria he gelennadurez d'ar bed, en Aviel. »

O veza bet klevet e oa kaset kalz a gristenien da Alexandri evit beza merzeriet abalamour d'ho feiz, Sant Anton a iez betek enno, lakât a reaz ho nerz-kaloun da grenvât ha choum a reaz ganto betek ho maro, d'ho zikour da c'houmit ho c'hurunen. Dont a reaz eur vech all c'hoaz da Alexandri, d'he bevar bloaz ha kant, evit displavaret an Arianed, ha diskleria ar guir feiz.

Mervel a reaz er bloaz 356, leun a veritou koulz hag a vloaveziou.

Sant Anton, abad, a zo he skeuden e kalz leac'hiou. Guelel a reer atao, en he gichen, eun aneval ha na vez ket hanvet en iliz. An drouk-spered, pa deue d'he denti, a gemere, guech, doare eul leon hag a glaske he spounta, guech doare eur marmouz hag a rea bep seurt ardou hag

arieziou, guech all, doare eun aneval louz benag. An aneval a vez skulptret atao eharz treid ar zant, a zigas sonj d'an dud euz an tentasionou-ze.

SONJOMP ERVAD :

Pa velomp sant Anton o kaout kement all a dentasionou, eun den hag a rene eur vuez ker santel, oc'h ober pinijen pell diouz ar bed, penaoz n'on euz-ni ket aoun d'en em goll, ni hag a vev er bed, e kreiz an tentasionou? Petra reomp-ni evit en em ziouall diouz an oll draou a laka hon ene e riskl d'en em goll? Petra reomp-ni evit kaout nerz d'en em zifen outo?

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ GENVER

Kador Sant Per e Roum

Ar gouel-man a zo bet savet evit delc'her sonj euz an deiz eüruz ma teuaz sant Per da Roum, da lakât enni he gador a Bab. Guechall, bugale Noe, pa zeujont da goms iezou dishenvel, a iez pep hini euz he du, evit skigna ouen an dud dre ar bed oll. Ebestel Jesus, pa ziskennaz enno ar Spered-Santel gant he zonezonou hag he c'hra-sou, o doa ar galloud da rei da entent an Aviel d'an oll, koulz d'ar re ne gomzent ket ar memez iez ganto evel d'ar re all.

An ebestel a iez neuze da bevar c'horn ar bed, o prezeg, dre ma 'z eant, Aviel Jesus-Christ.

Sant Per, penn an Iliz, a skignas sklerijen ar feiz er Judee, er Syrie, en Asi-Izela. Da Antioch e oa deut euz a Jerusalem. Goude beza choumet eun nebeut bloaveziou e kear Antioch ha tro var dro, sant Per a 'z eaz da jom da Roum, abalamour ar gear-man a oa, d'ar mare-ze, e penn ar bed oll. Eno e kendalc'haz da brezeg

hano Jesus, maro var ar groaz evit prena an dud: euz a Roum e oa eaz d'ezan kas beleien betek ar broiou pella, evit sklerijenna ar bed.

Pegen dister, hervez sonjezonou an dud, e oa an den a deuz da Roum! Eno e oa mistri ar bed, ar re a e'helle kas ho zoudarded d'an oll broiou a oa anavezet neuze: ar broiou-ze a oa d'ezho.

Eno e oa an dud desket ho deuz skrivet al levriou kaera a zo bet roet d'eomp gant ar baianed.

Eno e oa tud pinvidig ha ne ouient kount ebet d'ho danvez.

Petra en doa Per? Na galloud, na danvez, na deskadurez, ha goulskoude deut e oa evit ober d'an dud chench relijion. Roum, kear benn relijionou ar baianed, a oa galvet da veza, dre zikour kenteliou sant Per, kear-benn an Iliz.

Euz Roum Hon Tad Santel ar Pab, e plas sant Per, hag en hano mab Doue, a ro, da gristenien oll broiou ar bed-man, kelennadurez ar guir feiz, ar goure'hemennou santel, ha komzou ar vuez eternel.

Sant Per a oue Pab e Roum betek he verzerenti, epad pemp bloaz var 'n ugent.

Ar gador ma azeze enni sant Per da ober he zever a Bab a zo e'hoaz miret en iliz gaer Sant-Per e Roum. Bez' ez oa eur gador da veza douget, lavaret a reer eo bet da genta d'ar senatour Pudens. Abaoue an amzer-ze, e vez douget an Tad Santel ar Pab var eur gador ledan, ken liez guech ha ma tisken da iliz Sant-Per.

SONJOMP ERVAD :

Bep bloaz e vez great eur gouel evit delc'her sonj euz an deiz ma teuaz sant Per da ziazeza he c'halloud e Roum. Bep bloaz e vez great eur gouel ive, evit delc'her sonj euz an deiz ma z'eo bet konsakret pep iliz parrez. Bep bloaz e'hoaz an Tad santel ar Pab hag an eskibien a ra ive eun deiz a zevasion, evit delc'her sonj euz an deiz ma z'int bet konsakret. Ar c'honsilou a ro ali d'ar veleien da gaout sonj, da zeiz er bloaz ho belegiach, da drugarekât Doue da veza roet d'ezo eur stad ker kaer, ha d'he bedi d'ho zikour da ober mad ho deveriou a veleg.

Kerkoulz all e vefe da bep kristen henori deiz ar bloaz he vadiziant en eur zont da goves ha da gommunia, o nevezi ar bromesaou great evitan da Zoue gant he baeron hag he vaerounez, da drei kein da Zatan, d'he bompou, d'he oberou.

Sant Gregor a Nazianz, doktor euz an Iliz, a lavare guechall e oa neuze ar c'hiz evelse gant ar gristenien, ha sant Charles Borromee a gemennaz an devosion-ze en he eskopti.

Tadou ha mammou, bezit sonj da henori deiz ar bloaz ho padiziant, hag ho pugale a gemero skouer diouzoc'h.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ GENVER

Sant Melani Eskop

Ganet e maner Plaz, demdost da Redon, var dro ar bloaz 450, deiz gouel ar Rouaned, Melani a oue savet mad. He dud a c'halvaz beleien d'ober skol d'ezan en ho maner, met pa oue achu he studi gantan, Melani a 'z eaz d'ar gouent, d'he drivac'h vloaz: c'hoant en doa pellât diouz ar bed.

A benn eun nebeut bloaveziou, ar zant a oue choazet da abad; kemeret a reaz ar garg-se, en despet d'ezan, var a lavar d'eomp an historiou koz.

Sant Amand a oa eskop Roazon d'ar mare-ze. Epad ma poanie an abad da hench he venec'h, an eskop koz a goezaz guall glanv, ha Doue a ziskleriaz d'ezan eo an abad Melani a dliz beza eskop var he lere'h. Kas a reaz dioc'htu eun den da glask an abad, hag e lavaraz d'ezan: « Va mab muia-karet, prestik goude ma vezin eat euz » ar bed-man, an Tad Santel ar Pab a roio d'eoc'h eur » vanden zenved da ren; pedit mad betek neuze. » Eun nebeudik amzer goude beza benniget Melani, sant Amand a rentaz he ene da Zoue.

Ar veleien hag an dud vraz a oa en dro da vele ho eskop karet, o doa klevet he gomzou ha pleustret anezo. Pa oue diskennet korf an eskop er bez, ar pennou braz

a iez da gaout an abad Melani: « Hiviziken, emezo, » c'houi a vezo hor rener, bolontez an Aotrou Doue a » zo sklear. » Kaer en devoue an abad argila, red e oue dezan plega erfin; sevel a reaz, en despet d'ezan koulz lavaret, var gador eskibien Roazon.

Eur vech eskop, Melani a greskaz he biniennou « Beteg-hen, emezan, n'em boa da zonzjal nemeur ne- » met ennon va-unan, va menec'h ne oant ket diez da » vlenia var hent an devosion, breman, siouaz! em euz » da respount dirak Doue euz silvidigez oll dud va es- » kopti. » Hag e kreskaz kalz he biniennou hag he bedennou, rak aoun en doa d'en em goll.

Evit sikour ar zant en he labour, Doue a roaz d'ezhan ar galloud d'ober miraklou.

Eun devez, e Guened, eun den a renk huel a gollaz he vab, eur pennher. Feiz an den-ze a oa krenv, lavaret a reaz kerkent: « Savit ar c'horf ha kasit anezan dirak » Melani, hen a rento ar vuez d'am mab muia karet. » An dud a zentaz. Eun niver braz a bobl, hag en ho zouez kalz paianed, a heuliaz ar c'horf dre ruiou kear. Ar zant, tenerreat he galoun o velet feiz an tad, a zavaz he vouez: « Guenediz, emezan, petra zervich ober miraklou » dirazoc'h, pa 'z eo guir ne gredit ket? — Eskop » santel, eme ar bobl, ma sav an den iaouank-se divar » ar varv-skaon, ni a gredo er Jesus a brezegit d'comp. » Neuze Melani a lakeaz eur groaz var beultrin an hini maro, ha kerkent e savaz en eul lam. Ar bobl a griaz, estlammet: « Ni a gred, ni a gred. » Badezet e ouent, koulz lavaret oll.

En amzer-ze, Klovis, roue var eul loden euz ar Frans, en doa da stourm ouz rouaned ar Zad-Heol hag ar C'hresdeiz euz ar vro, a heulie falz-kreden Arius. Melani a reaz da bennou braz Breiz-Izel mont a du gant Klovis; en doare-ze, ar roue a c'hellaz trec'hi he enebourien, hag ar Frans oll a zeuaz da veza katholik e leac'h beza heretik. Klovis a rentaz kalz honor da eskop santel Roazon, rei a reaz eur maner d'ezan e Paris, evit ma c'helje choum eno, ha sklerijenna ar roue hag he guzulerien all.

Var he aliou, Klovis a c'halvaz oll eskibien ar Frans e kear Orleans, eno e oue douget, er bloaz 511, al lezennou ar re furra evit brasa mad ar relijion gatholik er vro.

Melani a joumaz pell c'hoaz da ren he eskopti: mervel a reaz, e kreiz he venec'h, goude beza roet d'ezo he vennoz diveza, e miz genver euz ar bloaz 530 pe 535.

SONJOMP ERVAD :

Nag a gargou dishenvel en deuz bet ar zant-man? Ganet eo pinvidik, hag ez a d'ar gouent da glask ar baourentez; renk en deuz er bed, hag ez a etouez ar venec'h, evit gellout beza da ziveza, dre humilite; c'hoapt en deuz entent ouz he ene hebken, hag e reer d'ezan beza abad da genta. eskop da c'houde: sikour a ra zoken roue Frans da c'houarn ar vro. Melani a zo deut da veza eur zant braz, en despet d'an tregas en deuz bet ar c'hargou-ze, abalamour m'en deuz atao karet Doue ha poaniet d'he servicha.

Meur a hini, en hon amzer, a zo chench-dichench o klask kaout eazamant; met mar karont, e kavint Doue e peb leac'h, hag e raint he zilvidigez.

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ GENVER

SANT SEBASTIAN, MERZER

Tad Sebastian a oa euz kear Narbonn, he vam euz kear Milan.

Sevel a rejont ho mab hervez Doue, rei a rejont d'ezan, ouspenn, eun deskadurez vraz. Bez' en devoa eur galoun huel ha dispount meurbed, rak-se an impalaer Dioklesian, o klevet hano euz Sebastian, hel lakeaz da vestr var he c'hoardou. Pa zeuaz an impalaer da ziskleria brezel d'an Iliz, Sebastian, petra benag m'en doa ioul en he galoun da rei he vuez d'he Zalver Jesus, ne ziskleriaz ket e oa kristen; met ne golle tro ebet da zikour ar verzerien dre guz. Mont a rea d'ho guelet er

prizoniou evit ho c'hennerza, sikour a rea dreist oll ar re a grene gant aoun rak ar poaniou kriz; mont a rea d'ho heul betek m'o deze gounezet kurunen ar verzerenti.

Daou gristen, daou vreur hanvet Mark ha Marsellian o veza bet barnet d'ar maro, ho zad hag ho mam, paianed, en em daolaz da dreid ar barnet, o skuill kalz d'elou, oc'h ober kalz a bedennou evit goulenn ma vije gedet eur miz abarz skei anezo ho daou: « Rak, a benn » eur miz, emezo, ni on dezo great kement var hor » bugale, ma teuint da zevi ezanz d'hon doueou, ha dreze da viret ho buez. »

Sant Sebastian a ieaz aliez da velet an daou vreur er prizoun. Ho c'haout a reaz laoskeat meur a vech: ho c'haloun a venne semplât dirak d'elou ho c'herent, met Sebastian ho c'hennerze. Ouspenn-ze, ar zant, dre he gomzou birvidik, a c'houezaz d'ar feiz tad ha mam Mark ha Marsellian, ho frijoug, ho bugale, ar barnet memez ha kalz a baianed c'hoaz. An daou vreur hag ar gristenien nevez-man a oue dizale lakeat d'ar maro evit ar relijion gristen.

Dont a rejor da lavaret d'an impalaer pegement a boan a gemere Sebastian evit miret ouz ar gristenien da adori doueou Roum ha da zevi ezanz dirazo. Braz e oue neuze koumar Dioklesian: kemen a reaz raktal staga Sebastian ouz eur vezen hag he laza a daoliou bir. Var he urz, he c'hoardou a dennaz kerkent varnan; pa veljont korf ar merzer karget a virou, e kredjont o doa he lazet, hag ez ejont kuit. Hogen, dioc'h an noz, setu eun intanvez santel, Iren, o tont evit sebelia korf ar merzer; met na pegen sonezet ne oa-hi ket, o velet e oa c'hoaz buez ennan! Kerkent e reaz he gas d'he zi, hag e louzaouaz he c'houlou.

Sebastian a deuaz da veza pare. A veac'h ma c'helle poeza var he dreid, pa glevaz e tlie Dioklesian tremen dre gear evit mont d'an templ; ar merzer kalounek a ieaz var he hent hag a lavaraz: « Impalaer, c'houi ne » glevit, na ne zougjit nemet gevier divarbenn ar gristenien. Laza a rit ar re vella euz an dud hag ho prasa

» servicherien; hint-hi, ne chanont da bedi evidoc'h. » Dioklesian a joumaz mantret o velet Sebastian: kredi a rea e oa maro; souezetoc'h e oue c'hoaz o klevet he gomzou kalounek. E leac'h rei skouarn da zelaou ar virionez, an impalaer kriz, paian aheurtet, a ieaz er meaz anezan he-unan; kemen a reaz neuze bazata ar merzer betek ma vije draillet he gorf gant an taoliou. Evelse e varvaz ar Zant, er bloaz 288.

He gorf a oue taolet er pri. Epad an noz, eur vaouez santel, Lusina, a reaz kas relegou ar merzer d'an iliz a oa dindan an douar, hag aziouti eo bet savet abaoe iliz kaer sant Sebastian e Roum.

SONJOMP ERVAD :

I. — Bian e ia hor c'haloun, ha choum a reomp mantret pa velomp Sebastian, gouliet oll gant ar birou, hag hanter lazet eur vech, o kerkent ha ma c'hell bale, da c'houlenn adarre rei he vuez evit Jesus-Christ. Ruzia a reomp gant ar vez oc'h anzav ne garomp ket gouzanv an disterra poan, an disterra koll, an disterra diezamant abalamour d'hor feiz. Pa velomp gouskoude peger ker eo koustet d'ar zent tizout betek ho c'hurunen, e rankomp lavaret eo red d'eomp lakât hon oll nerz d'he gounit ni ive: dre hon labour, dre hor poaniou, dre hor buez kristen. N'on dezo ket heb poan eürusted an env.

AN UNAN VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Santez Agnes, Guerc'hez ha Merzerez

Agnes, ganet e Roum er bloaz 293, a oa pinvidik ha kristen he zud: he mam a zeskaz d'ez abred karet Doue hag en em viret pur ha chast. Ar vere'h a voestlaz a-vianik he guerc'hded da Zoue.

Er bloaz 304, impalaer Roum a c'houe'hemennaz kinnig ezanz d'an idolou dindan boan a varo. O veza

m'oa bet bija chadennet ha merzeriet kalz beleien, er bloavez araok, meur a gristen a fallgalounaz, hag a zentaz ouz an impalaer.

Tud Agnes, kristenien vad goulskoude, a glaske diouall ho merc'h: ker koant, ker sentuz, ken devot e oa ma ne felle ket d'ezo he dioueret; met hi, gwestlet da Zoue, a verve he c'halon gant ar c'hoant da veza merzerez. Kalz re all a roe ar hant hag aour da Jesus, hi a felle d'ezi rei d'ezan he goad.

Eun devez m'edo e kear gant he flac'h, karget d'he diouall euz a bep drouk, e klevaz soun an droumpill o c'hervel an dud d'eur varnedigez var ar blasen. Hi, gant he mall, a c'hellaz tec'hed dioc'h he diouallerez, hag a ieaz dirak ar barner: « Mar deo sklanv, eme zant Ambroas, eur plac'h nevez o vont d'an eured, Agnes a oa skanvoc'h c'hoaz o vont d'ar verzerenti. »

Kaout a reaz ar barner, en dro d'ezan he vevellien, ar vourrevien. Guelet a reat en ho c'hichen ar starn koad a veze brevet an izili varnan, ar c'helkenn-ejen, ar fouetou ploum, ar c'hribou houarn a zanke doun e korf an den, an turkeziou braz a zispenn ar c'hig tam ha tam; dirak an oll izinou kriz-se, goad an dud a sklase en ho c'hreiz. Ar vere'hez iaouank a ouie ervad en doa ar barner peb galloud var ar gristenien, daoust ne oa ket c'hoaz daouzek vloaz achu, met choum a reaz dispount.

Ar baianed a oa eno a ginnigaz ezanz d'an idolou evit senti ouz an impalaer, met pa oue goure'hemennet d'ezi ober evelo, e respountaz: « Kristenez oun »; hag e leac'h kemeret ezanz, ar vere'h iaouank a verkaz varni he-unan sin ar groaz, sin ar gristenien. Drouk ennan o velet ober fae var he c'halloud, var an impalaer, var doueou Roum, ar barner a roaz urz da chadenna ar vere'hez iaouank. Poan gollet! manegou houarn ar zoudarded a oa re vraz, re zigor evit kloza daouarn ker munut!

Souezet o velet eur vere'h ker iaouank seder ha dispount dirazan, ar barner a reaz c'hoaza eun tan braz; met Agnes ne fall-galounaz ket evit guelet an tan: he

c'halon d'ezi a oa devet gant karantez he Zalver Jesus.

O velet ar plac'h iaouank-se ker kaer, ken laouen dirak an oll boaniou a c'helle he guaska, ken dispount dirak ar maro, kalon paotred iaouank a oue tenerreat: kinniget e oue da Agnes distrei d'he zi, mar karje rei he ger da unan pe unan anezo. Met hi, ar vere'hez pur ha glan; hi, he bizach sklerijennet gant karantez Doue, a ziskleriaz freaz ha sklear: « Perak komz d'in euz eur » pried er bed-man? Roet em euz va ger d'eun all, da » unan hag a zo dreist an oll evit ar gened, ar garantez, » ar pinvidigeziou. Pec'hed em befe o sonjal en eun all, » ha ker kaer eo m'em euz mall da veza d'ezan. »

Ar barner a zougaz kerkent ar zetans: Anges a oa koundaonet d'ar maro dre ar c'hleze.

Unan euz ar vourrevien a dosteaz, kalet e kave skei gant eur vere'h ker iaouank, met ar verzerez a roaz kaloun d'ezan dre he c'homzou. Ober a reaz eur beden berr ha birvidik da Jesus, en eur zével he fenn hag he daoulagad varzu an env, ha kerkent ar bourreo a zan-kaz he gleze e gouzoug ar verzerez. Koeza a reaz ar vere'hez iaouank, met bez' e oa bet chast ha modest en he buez, modest e oue betek er maro. Koeza a reaz var he daoulin: he dourn a zastumaz, a glozaz evit ar vech diveza he dillad en dro d'ezi; he ene a nije d'ar baradoz epad ma peurgoeze he c'horf var an douar (21 a viz genver 305).

SONJOMP ERVAD :

Iaouank-flamm c'hoaz, santez Agnes a voestlaz da Zoue he c'halon hag he c'horf. O na peger kaer eo Jesus! Na guir en deuz da veza karet! En em roit oll d'ezan, hag hoc'h ene a vezo leuniet a c'hrasou. O Jesus, pried dinam an eneou, ma vefac'h anavezet gant an dud, e teufent da zisprijout ar bed, evit beza d'eoc'h-hu, d'eoc'h hebken.



AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

SANT VISANT, MERZER

Sant Visant a zeuaz er bed e kear Hueska er Spagn. A-vihanik ez eaz d'ar skol gant Valer, eskop santel Saragos; studia a reaz evit beza beleg. Iaouank e oa e'hoaz pa resevaz an Urz a Avielier. An Aotrou 'n eskop o velet peger braz e oa he furnez, he skiant hag he zan-telez, her c'hasaz, en despet d'he iaouankiz, da brezeg al lezen gristen.

Visant en em roaz kalounek da gatekiza ar bobl. Gounit a reaz d'ar feiz kalz a dud divadez, hag ober a reaz guelloc'h kristenien euz an dud badezet. Met Marsian, gouarner paian ar vro, a feaz drouk emman o velet al labour-ze, hag a reaz kregi e Valer an eskop santel, hag en he ziskibl Visant, an avielier.

Valer a oue barnet d'an harlu, ha Visant da veza merzeriet. An avielier iaouank a oue karget a chadennoù ha goallgaset hed an hent betek kear Valans. Eno ar gouarner a gemennaz d'ezan devi ezanz d'an doueou dindan boan a varo, met Visant a respountaz: « C'houi » n'am spountit ket gant ho kourdrouzou iud, gant ho » poaniou kriz; temit mar kirit va buez diganen, he » e'hinnig a ran laouen d'am Zalver benniget, maro » e'vidon. Met ne lamot ket, euz va e'haloun, ar ga- » rantez am euz evit Jesus, va mestr muia-karet. Na » adorin ket ho toueou! »

Ar gouarner neuze, henvel ouz eur bleiz klanv, a reaz ar goasa indazerez var ar merzer, ker fidel da Zoue: ober a reaz d'ar vourrevien hel lakât var eur starn-koat. Ar re-man, goude beza staget kerdin ouz he dreid hag he zaouarn, en em lakeaz da jacha var he oll izili, ha da vrevi he oll eskern. Da e'houde e oue dispennet he gorf gant skilfou dir, ken a zirede ar goad d'an douar, met ar merzer a joume laouen. Neuze e oue astennet var eur e'hrill, tan-ruz dindan: korf sant Visant a roste tu ha

tu; da e'houde e lakjont eun houarn ruz varnan, hag erfin evit krisât ar boan e taoljont e'hoalen var ar gouliou: ar merzer a joume bepred seder.

Dre ma kreske he verzerenti, an Aotrou Doue a lakea nerzusoc'h grason, ha dousoc'h dudi en he galoun. E kreiz an tan, e kreiz he boaniou, sant Visant, o sellet etrezek an env, a vouse'hoarze seder evel ma vije bet azezet, en hanv, var eur flouren e'hlaz, oc'h ehana gant plijadur: laouen e oa, rak he galoun a oa gant an Aotrou Doue, hag elez ar baradoz.

Ar gouarner, leun a fallagriez ha goloet a vez, a reaz digas Visant d'ar prizoun. Eno, e oue adarre ruillet ha diruillet he gorf paour var eur guiskad tammou guer ha podou torret. Met, na kaera burzud! eur sklerijen, ske-dusoc'h eget sklerijen an heol, a veljor neuze o para er prizoun tenval; moueziou dudiu a oue klevet; elez ar baradoz eo a deue niveruz daved ar merzer prizouniet, o tigas d'ezan levnez an env, hag o kana meudeudiu an Aotrou Doue. An archerien a oa er prizoun ouz he ziouall a oue gounezet dre ar burzud-se, hag a e'houlennaz re-seo skramant ar vadiziant.

Ar gouarner Dasian ne oa ket e'hoaz torret he grisder; ioul en devoa da verzeria a nevez sant Visant: rak-se e kemennaz lakât an avielier santel var eur guele bouk, rei d'ezan diskuiz ha magadurez evit asten he vuez; met a veac'h e oa douget sant Visant var eur guele, ma kouezaz heb buez: he ene a oa nijet prim d'ar joäusdet, gant an elez, d'an 22 a viz genver 304.

SONJOMP ERVAD :

Petra n'o deuz ket gouzanvet ar Zent er bed-man? Na braz e oa ho fasanted, ho ners-kaloun, ho levnez e kreiz ho foaniou!

Da heul Hor Zalver Jesus, da heul ar verzerien, klaskomp gounit an envou dre hor poaniou. Peb den, er bed-man, en deuz eur groaz da zougen: brasoc'h poaniou o deuz lod da zivoaska, re all o deuz poaniou skanvoc'h. Poaniet omp a gorf: labourou tenn, diezamanchou, klenvejou hon euz; met hon ene a vez guasket ive: tenvalijen var hor spered, ioulou direiz en hor e'halon, tristidigez hag hirvoud.

Goulenomp eta ar vertuz a basianted: ar baradoz hon euz dâ c'hounit.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Sant Remond Pennafort

(1175-1275)

Ar zant-man, ganet er Spagn er bloaz 1175, a oue lakeat abred-kaer var ar studi. Mont a reaz d'he ugent vloaz d'an Itali, da zelaou mistri gouizieg, da c'houde e reaz skol d'he dro.

Distrei a reaz d'he vro, hag eskop Barselon her greaz chaloni; met mar doa braz he zeskadurez, he humilite, he garantez evit ar beorien hag he zevosion epad an offisou a oa brasoc'h e'hoaz.

He garantez e kenver ar Verc'hez Vari a reaz d'ezan ober dispignou evit ma vije great gant muioc'h a honor gouel an Itroun-Varia-Veurs e kear Barselon; da c'houde e viskaz sae ar venec'h en Urs Sant Dominik, Skriva a reaz, var urz he zuperioled, eul levr kaer hag a zo bet eur sklerijen evit kovesored he amzer. Sikour a reaz sant Per Nolask da zével eun Urz nevez a venec'h evit savetei ar gristenien a oa sklaved gant an Turked; sant Per Nolask eo a reaz al labour, var aliou sant Remond, ha gant arc'hant roue Aragon.

Ar Pab, o veza klevet hano euz he zantelez hag euz he vouiziegezh, a reaz d'ezan dont da Roum. Lakât a reaz dre renk al lezennou douget gant ar Pabed betek neuze, ha sikour a reaz an Tad Santel; met pa glaskaz ar Pab ober eun eskop anezan, ar manac'h a zistroaz buan d'ar gear.

Er Spagn e prezegaz gant kement a frouez d'ar Mahometaned ha d'ar Juzevien, ma leverer e reaz da zek mil anezo reseo ar vadiziant. Guir eo, Remond a oa ker santel ha ma oa gouizieg. Prezeg a rea gant nerz euz ar gador a virionez, met pa lavare an oferen e tiskoueze beza ken devot ma teue ar c'halonou kaledet da veza tenerreat.

Ar Pab a roaz galloud d'an den santel evit brasa mad ar relijion er Spagn; ar roue a ziskouezaz kaout ar muia fizians ennan: mont a rea da govez gantan. Ar roue a anavezaz, eun devez, e oa ar c'hovesour eun den stard en he zever.

Eat e oant ho daou d'eun enezen hanvet Majork, pa oue lavaret da zant Remond e oa eur vaouez a re oc'h heul ar roue. Ar manac'h devot, atao tost d'he goustians, a leaz dioc'htu da gaout heman: « N'oc'h euz guir » ebet, prins, emezan, da zalc'her ar vaouez-se var ho » tro, kasit-hi d'ar gear. »

Ar roue a respountaz her graje, met ar verc'h-se a joumaz en enezen. Neuze ar zant a ziskennaz er porsmor, da glask eur vag; met ar vartolodet a ziskleriaz d'ezan: « Difen on deuz, a berz ar roue, d'ho kas ac'han. »

Goude beza choumet nec'het eur pennadik, ar zant a dennaz he vantel, hag a ledaz anezhi var an dour. Neuze, leun ar fizianz en Aotrou Doue, e reaz sin ar groaz gant feiz, hag e savaz heb aon var ar vag a c'hiz nevez-se. Ar vantel a redaz var an dour; c'houec'h heur da c'houde, ar zant a oa en em gavet var an aod, e Barselon, demdost d'he gouent: teir leo vor hag hanter kant en doa great. Pa glevaz hano euz eun dra ker burzuduz, ar roue ne joumaz mui da argila: ar vaouez a oue kaset kuit.

Erfin, d'he naontek vloaz ha pevar-ugent, deiz gouel ar Rouaned euz ar bloaz 1275, ar zant braz-man a 'z eaz da reseo he gurunen er baradoz.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Remond, henoret gant ar Pab hag ar Roue, goulenet da eskop, a zo guell gantan choum eur manac'h dister ha netra ken. Pebez kentel roet d'an dud ourgouilluz, a zo atao o klask sevel dreist ar re all, daoust ma n'euz netra easoc'h hag asuroc'h eget servicha Doue er stad m'omp bet lakeat.

II. — Ar zant-man a zioueraz eur c'halz euz he arc'hant, evti ma vije kanet guelloc'h gouel an Itroun-Varia-Veurz e Barselon; deskomp dre eno pebez respet a dleomp da gaout evit goueliou ar Verc'hez, miomp anezo gant devosion, sikouromp ar re all d'ho miret: roomp ni ive, eur guennek benag evit kempen ha kaerât an ilizou.

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Sant Timothee, Eskop ha Merzer

Ar zant-man a deuaz er bed e bro al Lykaoni en Asi. He dad a oa paian, met he vam, da genta juzeo, a oa deut da veza kristenez.

An Abostol sant Paol, pa deuaz da brezeg an Aviel dre ar vro-ze, a glevaz hano euz furnez ha santelez Timothee. Goulen a reaz digantan mont d'he heul dre ar bed da skigna al lezen gristen, ha Timothee a ieaz kerken gant sant Paol dre an Asi, ar Masedoan ha zoken betek Roum, ouz he zikour da c'hounit eneo da Jesus. Pebez feiz krenv, pebez karantez evit an Aotrou Doue a ziskouezaz ar zant-man o kuitât evelse, heb damanti, he dad, he vam, he vro evit-ober hent da heul eun tremeniad o vont ne oniet ket da he leac'h, da glask paourentez, skuisher, ha poaniou a bep seurt.

E kear Béree, e bro ar Masedoan, ar Iuzevien a gemeraz kement a gasouni ouz sant Paol ma rejont d'ezan tec'het kuit, met an Abostol braz a lezaz Timothee var he lerc'h, evit krenvât feiz ar gristenien nevez.

Sant Paol a roaz urz d'ezan da c'houde da vont euz Beree da gear Thessalonik, eun tammik larkoc'h: eno an dud fidel a oa goall-gaset, Timothee a deuaz a benn d'ho c'hemnerza.

Euz Thessalonik ez eaz da gear Korinth, da gelen ar gristenien, ha da viret ho feiz digemesk ha digatar.

Ac'hano, Timothee a dreuzaz ar mor gant sant Paol evit dont da gear Ephes en Asi-Izela; el leac'h-man ive ar Iuzevien a deuaz da gemeret kasoni ouz an Abostol, hag e rankaz tec'het ac'hano, met rei a reaz da Dimothee ar garg da ren en he blas ar gear vraz-se.

Sant Paol ne ehane da labourat evit ar feiz, pe hen a brezege, pe hen a gase liziri d'an ilizou ha d'ar bastored

evit ho zikour da ober ho zilvidigez. Da Dimothee e kasaz, euz kear Laodisee, eul lizer karantezuz, leun a genteliou fur ha santel evit ren mad ar gristenien a oa en he garg a bastor. El lizer-ze sant Paol a zisklerie peger paour, pegen dister e veve Timothee: he alia a rea memez da ober nebeutoc'h a binijen, gant aon na deufe da veza re zempl.

Kas a reaz d'ezan eul lizer all euz a Roum: « Ama » oun chadennet, abalamour d'Hor Zalver Jesus, eme » zant Paol d'he ziskibl; ar zonzj ac'hanoe'h ne ia ket » euz va spered, na deiz, na noz. » Hag e pede anezan da zont d'he velet.

Timothee a rene kristenien Ephes gant dousder, ha gant nerz, o klask ho renta guelloc'h bemdez. Met setu d'an 22 a viz genver 97, e reat e kear Ephes eur gouel braz evit henori Dian, ar falz doueez. Timothee a zavaz he vouez da lavaret eo eun dra dizakr mont d'an daoulin dirak doueou faoz ha fallakr, hag ober pec'hejou evit ho henori: « Rak, emezan, n'on deuz da adori nemet » eun Doue hebken, ar mestr a zo dreist pep hini: Doue » a zo santel, goulen a ra ma vefemp santel oll. »

Ar baïaned direol en em lakeaz neuze d'he labeza a daoliou mein, hag a daoliou baz: ar gristenien a ziredaz prim d'he denna ac'hano, her c'has a rejont hanter varo, var eun dorgen e kichen kear; prest goude e varvaz.

SONJOMP ERVAD :

I. — Mam sant Timothee a zavaz he mab hervez Doue, hag ar mab-se a deuaz da veza eur zant. Pebez gras kaer eviti hag evitan!

Pleurliesa dioc'h an doare ma vez kelennet ar bugel e vez kavet an den. Hervez an had a vez hadet e vez mad pe fall ar frouez, ar galoun ive a vez mad pe fall dioc'h ma vezo lakeat enni a vihanik eur gelennadurez santel pe unan zifeiz.

II. — Sant Timothee en doa eun tad paian hag eur vam gristen. Eur riskl eo evit ar bugel kaout eun tad pe eur vam direol. D'an hini anezo en deuz doujanz Doue, eo dleet hench a ar vugale, ho c'helen, rak hen eo a zalc'h en ho c'henver plas an Aotrou Doue. An dud a zav ho bugale hervez Doue, a ra eur baradoz euz ho zi. Met an tadou hag ar mammo

ne roont na keennadurez kristen na skouer vad d'ho bugale, o dezo bugale difeiz hag a raio ho rann-galoun. Ha pebez spount e vezo d'ezo respount da Zoue pa 'z aint dirazan! Epad an oll eternite, pebez rebechou kriz ne raio ket ar vugale daonet d'ho zad ha d'ho mam, o deuz ho c'holllet.

AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Sant Paol gounezet d'ar feiz

Eur burzud kaer eo gullet eun enebour touet d'ar gristenien, o tont da veza, dre c'hras Doue, eun doktor hag eur zant braz. Buez an Abostol sant Paol a ziskouez d'eomp ar burzud-se.

Ar zant-man, ganet e kear Tars er Silisi, a oue savet e relijion ar Iuzevien, ha kaset d'ar skol gant ar brasa doktored euz an amzer-ze. He hano neuze a oa Saul. O velet an Ebestel o skigna al lezen gristen dre ar vro, Saul a vagaz kasouni ar maro ouz kement hini a oa diskibl da Jesus. Bez' oa unan euz ar re a varnaz sant Stephan d'ar maro, hag a roaz an dorn d'he labeza. Eun deiz, o klask skuill adarre goad ar gristenien, eur gounnar skrijuz ennan, e teuaz da c'houlenn liziri digant beleg braz Jerusalem, evit mont da gear Damas da gere'hat ar gristenien, goazed ha merc'hed a gavje eno, ha d'ho digas chadennet, gantan da Jerusalem.

Roet e oue d'ezan liziri, ha setu Saul gant eur vanden voazed o kerzet var hent Damas. Hogen edo o tostât ouz kear pa darzaz varnan, en eun taol, eur sklerijen skeduz meurbed; koueza a reaz d'an douar hag eur vouez a lavaraz: « Saul! Saul! perak e rit-hu brezel » d'in? » — « Piou oc'h-hu, Aotrou? » — « Me eo Jesus, » an hini ma rit brezel d'ezan, poaniuz eo d'oc'h » stourm ouzin. » Neuze Saul, en eur grena gant ar spount a lavaraz: « Aotrou! petra a c'houlennit a ra- » fen? » — « Savit, eme Jesus, hag it e kear, eno e vezo » merket d'oc'h petra o peuz da ober. »

An dud a oa gantan a oa souezet: klevet a reant eur vouez heb gullet den. Saul a zavaz en he zav, digor braz he zaoulagad ne vele bame; he gompagnunez he renaz dre an dorn tre betek Damas. Epad tri devez e choumaz eno, dall-put, heb dibri nag eva.

Hogen, bez' e oa e kear eur c'hristen hanvet Anani; epad he gousk e klevaz Doue o lavaret d'ezan: « Savit » hag it d'ar ru Eün, hag, e ti Jud, klaskit eun den » hanvet Saul, rag eno ema o pedi an Aotrou Doue. It » d'he gaout, rak he zibabet am euz evit prezeg va hano » santel. Gullet a raio pegement a boaniou en dezo da » c'houzanv abalamour d'in. »

Anani a ieaz betek Saul, hag a lavaraz, oc'h asten he zaouarn varnan: « Saul, va breur, Hor Zalver Jesus » en deuz komzet d'in ac'hanoc'h, ha va digaset en deuz » ama evit renta d'oc'h ar gullet, ha rei d'oc'h skel- » rijen ar Spered-Santel. » Ker buan e kouezaz evel skant euz daoulagad an dall, hag e velaz adarre ar sklerijen. Anani he gatekizaz, hag a roaz d'ezan ar vadiziant.

Neuze Saul a gemeraz eun tam boued. Choum a reaz gant an diskibien epad eun nebeut deveziou, ha da c'houde, ez eaz d'al leac'hioù m'en em vode ar Juzevien, da brezeg eo Jesus mab Doue. Ar Iuzevien a oue souezet. « Daoust ha n'eo ket hen-man, emezo, a rede » da glask ar gristenien evit ho chadenna, hag ho lakât » d'ar maro. » Met Saul a brezege muioc'h-mui bemdez, o tiskouez sklear d'ezo eo Jesus mab Doue. An hini a oa bet enebour ar gristenien a deuz da veza an Abostol sant Paol. Mont a reaz, dre ar bed, da skigna ar feiz. Displega a reaz difazi ar guirioneziou a zo dreist hor skiant, ha skriva a reaz ive keennadurez ar Spered-Santel.

Oll da Zoue, korf hag ene, e poaniaz a greiz kaloun evit he c'hloar ha silvidigez ar bed, betek ma oue dibennet abalamour d'Hor Zalver Jesus.

SETU AMAN LOD EUZ KENTELIOU SANT PAOL

I. An dud a fell d'ezo beva santelamant e servich Jesus-Christ, o dezo poan da zivoaska er bed-man.

II. Evel n'on deuz digaset netra ganeomp en eur zont er bed, ne gasimp ken nebeut netra ganeomp en eur vont euz ar bed-man.

III. Kredomp ez eo aoualc'h d'eomp kaout peadra d'en em vaga ha d'en em viska.

IV. An den a glask beza pinvidik, a gouez aliez e rouejou an drouk spered.

SONJOMP ERVAD :

I. — Doue a zo brasoc'h he drugarez eget fallagriez an den: dibaba a reaz sant Paol, enebour ar gristenien, da veza eun abostol braz. C'houi, pec'herien, ne dleit ket ken nebeut koll fizianz: n'emaoc'h ket goasoc'h eneb Doue eget Saul; trugarez Doue n'eo ket bihaneat; gellout a ra distrei ho kaloun, evel m'hen deuz great kaloun sant Paol. Eun dra hebken a zo red d'eoc'h ober: senti dioc'htu ouz mouez an Aotrou Doue, evel ma reaz ar zant-man.

AR CHOUECHVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Sant Polykarp, Eskop ha Merzer

Ar zant-man a oa iàouank c'hoaz pa oue badezet. Bez' en devoue ar c'hras kaer da anaout sant Ian Avieler, da reseo he gelennadurez evel m'en devoa sant Ian resevet kelennadurez Hor Zalver benniget. Irene, diskibl da zant Polykarp, a skrive divezatoc'h divar he benn: « Dre ar zonzj e velan c'hoaz va mestr » muia-karet, azezet o prezeg lezen Doue. Evel eur roue » e oa kaer da velet, an eskop santel. He glevet a ran » c'hoaz o tisplega d'eomp an amzer m'en devoa tremen » net e skol sant Ian, ha gant meur a hini all euz an dis- » kibien a oa bet oc'h heuil Hor Zalver benniget. » Eun dudi e oa klevet, divar muzellou sant Polykarp, preze- » gennou sant Ian Avieler o tisplega buez, kelennadurez, burzudou Jesus.

Sant Ignas, eskop Antioch, barnet d'ar maro dre urz an impalaer Trajan, er bloaz 106, a oue kaset euz Antioch da gear Roum, evit beza debret gant al loened gouez. He hent a dremene a biou kear Smyrn: setu m'o devoue sant Ignas ha sant Polykarp ar joa d'en em velet; ho daou e oant bet er skol gant sant Ian, hag abaoe ec'h en em garent a vir galoun. Sant Ignas en devoue eur joa vraz, en eur gerzet var hent ar maro, o komz gant he vignoun santel. Frealzet oll e oue gant karantez ha pedennou sant Polykarp, hag eüruz e oa o velet kristenien Smyrn, ker sentuz ouz ho Eskop santel, o kerzet d'he heul var hent an devosion, var hent ar baradoz. Ar merzer devot, o kuitât Smyrn, a rente a greiz kaloun mil bennoz da Zoue.

Er vech-man, sant Polykarp n'en devoue ket ar c'hras da veza, evel sant Ignas, lakeat d'ar maro: espernet e oue. Goude eun nebeut ehan, kounnar ar baianed a zavaz adarre enep ar gristenien: an impalaer Adrian a gasaz, dre ar vro, urz d'ho distruja.

E kear Smyrn e oue gulet neuze eur vanden arche-rien o tont da di an aotrou 'n Eskop. Kaout a rejont ar zant, dispak he vleo guenn-kann, daoulinet o pedi; hen digas a rejont dirak ar barner. Hen-man a lavaraz d'an Eskop koz rei he valloz da Zoue; sant Polykarp a respountaz neuze: « C'houec'h vloaz ha pevar ugent so ez » oun servicher d'hor Zalver Jesus, peb tra am euz bet » digantan, n'en deuz great d'in nemet vad, he blijadur » a zo va renta eüruz; hag ez afen-me breman, divar » dreujou an eternite, da daoler va malloz d'am zad » madelezuz? Oh! va Jesus benniget! me ho kar a » greiz kaloun: levenez va ene eo ho karet da virviken! »

Barnet e oue ar zant da veza devet ez-veo. Great e oue eun tantad tan dindannan, met an tan n'hen devaz tam. Neuze eun taol kleze a zigoraz da zant Polykarp dor ar baradoz.

Er Frans e renter honor d'ar zant-man, rak sant Pothin, sant Irene, sant Benign, sant Andoch, diskibien sant Polykarp, a zo deut en hor bro da brezeg ar relijion gristen.

SONJOMP ERVAD :

Sant Polykarp a lavaraz d'ar barner: « Ne m'euz ket ar » galoun da rei va malloz d'am Doue! » Na kaerra komzou! Nag a vech, er c'hountrol, e vez klevet kristenien o lavaret: « N'hellan ket miret da doui Doue, d'he vlasfemi. » Taoler a reont hano Doue e kreiz ho c'hounnar, e mesk komzou milliget: komz a reont evel an diaoulou en ifern. Eur vez, eun dismeganz eo kement-se, ha red eo terri ar pleg fall-ze. Dont a reot a benn d'hen ober mar karit ober eun binijen benag pe rei eun diner benag d'an iliz, ken aliez guech ha ma tistagit unan euz ar pec'hejou-ze, a laka ar Verc'hez Vari da zerri he daoulagad.

Hano Doue a zo teir guech santel: arabat eta hel lavaret nemet gant doujanz, gant karantez, evit he veuli hag he bedi.

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Sant Ian Chrysostom

ESKOP HA DOKTOR EUZ AN ILIZ

Ar zant-man a zo bet lezhanvet Chrysostom, abalamour ma oa eur prezeger dispar.

Ganet e oa e kear Antioch er bloaz 344. Mont a reaz var ar studi da veza alvokad, met d'he bemp bloaz var 'n ugent, e troaz kein d'ar bed, ha da varo he vam ec'h en em dennaz en dezert.

Eno e rea pinijen, e pede Doue, hag e teskaz dindan envor ar Skritur Zantel; met a benn c'houec'h vloaz e kouezaz klanv, hag e tistroaz d'ar gear, da Antioch.

Neuze e resevaz an urz a Avieler, ha pemp bloaz goude e oue beleget. Dre he vuez santel, dre he brezegennou dudiuz e teuz da veza brudet evel eun den dispar.

Eun deiz, tud Antioch e kounnar o doa diskaret, dre gear, skeudennou an impalaer. An aotrou 'n eskop Flavian a gemeraz aoun na deuje droulanz an impalaer da goueza var gear, hag a iez da Gonstantinopl, da c'hou-

len pardoun evit an dud. Ian Chrysostom, choumet en Antioch, a reaz kement dre he brezegennou, ma konsolaz an oll o lakât ar peoc'h en ho c'halonou, betek ma tistroaz an Eskop Flavian da zigas d'ezo pardoun an impalaer.

Pa varvaz eskop Konstantinopl, er bloaz 397, sant Ian Chrysostom a oue hanvet da eskop en he leac'h. Raktal e stagaz da ober brezel d'an dizursiou ha d'ar skoueriou fall. Hen ober a reaz gant eur furnez, eun dousder, eun nerz dreist muzul; ouzpenn-ze, he gelennadurez a oa helavar meurbet. Ren a rea eur vuez euz ar re zantela, mad dreist e oa ouz ar paour, ouz an dud glac'haret, ouz ar re goz hag ar glanvourien. Rei a reaz he oll beadra da zavel hospitaliou; difen a reaz ar paourkeaz breset gant ar pinvidik; poania a reaz kement evit mad an oll, ma teuz a benn da c'houmit ar bobl a bez. En despet d'an oll labourou-ze, daoust d'ezan da brezeg bemdez, sant Ian Chrysostom a gavaz c'hoaz amzer ha nerz-kaloun da skriva levriou kaer.

Hogen, ouspenn tamall an dud pinvidik a reaz, mont a reaz betek tamall an impalaerez Eudoxi, abalamour m'e doa hou-man tennet eun tam douar digant eun intanvez paour. An Eskop santel a lavaraz d'ezi: « Traik » ar paour a zo sakr, itroun, pec'hed eo d'eoc'h he lae- » rez. » Eudoxi, ouz he glevet, a vervaz gant ar gounnar, hag a varmaz sant Ian Chrysostom d'an harlu. Ker- » kent ha ma oue kaset kuit an eskop muia-karet, an dud oll dre gear a zavaz da c'hourdrouz an impalaerez, ha red e oue d'ezi he c'hervel en dro evit kaout ar peoc'h.

Met abarz nemeur an impalaerez a reaz eur gouel a zizurz; sant Ian Chrysostom a zavaz adarre huel he vouez enep an dizursiou-ze, hag enep ar skoueriou fall, dismeganz ar gristenien. Eudoxi, en dro-man, a reaz kas an Eskop kalounek d'an harlu da belloe'h bro. Neuze eun hirvoud braz a oue klevet dre gear: ar beorien, an dud dister eo a vouele d'ho zad muia-karet.

Nag a boaniou a bep seurt a rankaz da zivoaska, pell euz he vam-vro; met ar poaniou-ze ne c'heljont ket terri

he nerz-kaloun; labourat a reaz er vro estren evit gloar Doue ha silvidigez an eneo.

An Tad Santel ar Pab Innosant I a zougaz, e konsil Roum, eur zetanz da lavaret digas en dro sant Ian Chrysostom d'he Eskopti a Gonstantinopl, met ar zant ne c'hellaz ket herzel ouz skuider ar veach, nag ouz ar goall-daoliou a roet d'ezan: mervel a reaz en hent. He gomzou diveza a oue: « Meulet ra vezo Doue da virvi- » ken! » Tremen a reaz d'ar bevarzek a viz guengolo euz ar bloaz 407, e kear Komon, en Asi-Izela.

Pevar devez goude, an impalaerez Eudoxi a oue ive skoet gant ar maro, hag eur barrad skrijuz a gazare'h a gouezaz var Gonstantinopl.

SONJOMP ERVAD :

Nag a draou kaer o deuz great ar zent! Nag a boaniou kriz o deuz-hi gouzanvet evit an Aotrou Doue!

Sant Ian Chrysostom en deuz lakeat he oll ners kaloun da zervicha Doue; met ni petra a boan a gemeromp-ni evit gloar Doue? Petra a ziez, petra a vad a reomp ni evitan? Evit heuil roudou ar zent, goulennomp evelde karantez an Aotrou Doue!

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

Sant Julian, Eskop

Ganet ha savet e Roum, Julian a oue digaset gant sant Klemant, unan euz ar Pabed kenta, da brezeg ar feiz kristen e bro ar Mans. Ar zant a oa dija eskop pa deuz euz a Roum: eur beleg hag eim avieler a oa asamblez gantan.

Kenta guech ma prezegaz an Aviel da dud kear, ar re-man a oue souezet; ar zant, evit diskouez d'ezo e oa guirion he gomzou, hag o c'houzout ervad e oa re nebeut a eienemou eno, a zankaz he vaz en douar en eur ober

eur beden da Zoue; kerkent, eun eienen a zinklaz. (An eienen-ze a veler hirio c'hoaz e kreiz kear ar Mans).

An dud a ziredaz da velet an eienen, a zelaouaz gant respet keleennadurez ar zant; met pa veljont e oa diez miret ar goure'hemennou, pa veljont e tle eur c'hristen trei kein d'ar plijadureziou fall, ar pennou braz a ziskleriaz da genta: « Ar relijion-ze a zo re ziez heuil anezi. » Hag eur c'halz euz ar re vraz a joumaz paianed.

Ar zant o veza eat da velet difenner kear, a gavaz e toull an or eun dall o c'houlou an aluzen; Julian a rentaz d'ezan ar guelet. Difenner kear a oa eun den eün ha leal. Pa velaz ar burzud kaer-ze e c'houlennaz ar vadi-ziant, hen hag he oll dud; rei a reaz al loden vella euz he di evit servichout da iliz.

Divar neuze, ar guir relijion a c'hriziennaz a nebeubdou er Mans ha tro var dro: ar gristenien genta, kelemmet mad gant ar zant, a ziskoueze kement a garantez an eil evit egile, ma teue kaloun ar baianed da denerrât. Doue a zikoure he zervicher, en eur rei d'ezan galloud d'ober miraklou heb ehan.

Eun devez e tigasaz adarre e buez eur paotr iaouank nevez maro, mab unan euz brasa boure'hizien kear.

Eur vech all, Julian a gavaz tud hag a gase var ar meaz, eur c'horf maro d'ar vered. Ar zant, leun a fizians e Doue, a c'houlou digant tad an hini maro: « Ma sav » ho mab beo euz he arched, dre oll c'halloud ar Jesus » a brezeg an d'eoc'h, ha kredi a reoc'h eo Jesus Doue » e guirionez? — Ia, emezan, kredi a rin. »

Neuze ar zant a ra da Zoue eur beden birvidik, ha kerkent an den maro a zav euz he arched: « Braz eo e » guirionez, eme an den iaouank, an Doue a brezeg Ju- » lian d'eomp. Ah! emezan, adori a reamp an diaoulou, » ho guelet am euz en ifern, eno e tivoaskont poaniou » hag a bado da viken. » Hag an dud, o velet burzudou ker sklear ha ker braz, a grede e Jesus-Christ, a c'houlenne ar vadi-ziant, hag a jenneche buez.

Goude beza great kalz miraklou all, ha beza starteat ar gristenien er feiz, ar zant a zistroaz da Roum evit goulou bennoz an Tad Santel ar Pab var he labour.

Ar Pab a vennigaz an eskop santel, rei a reaz d'ezan beleien evit he zikour, ha relegou hiniennou euz a verzerien Roum evit maga devosion he gristenien. An eskop santel a zistroaz laouen: ober a reaz d'an dud honori relegou ar verzerien, e leac'h adori idolou koat pe vean, evel diagent.

Sevel a reaz ive eur skol evit kentelia ar iaouankiz, ha da c'houde, dinerzet gant an oad ha gant he labourou braz, e roaz an dilez euz he garg a eskop. En em denna a reaz en eun ermitach, da zonzal en he ene hag en he eternite; eno eo e varvaz d'ar 27 a viz genver euz ar bloaz 117: renet en doa he eskopti epad tri bloaz ha daou-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz bevet koz, rak ne oa ket iaouank pa oue great eskop, ha goulskoude en deuz renet he eskopti epad ousspenn daou-ugent vloaz. Bet en deuz en he vuez, labour, poan ha trubuil, choumet eo pell gouskoude var an douar.

Ha perak? abalamour he vuez a zo bet reizet mad. Ioulou fall an den, plijadureziou faoz ar bed hag ar c'hig, a ziverra ar vuez kalz muioc'h eget na ra ar iun hag ar binijen. An den a vev e gras Doue, a zo ar peoc'h en he galon, hag a joumo iac'h. Ar gourmandiz, eme zant Aogustin, e deuz lazet muioc'h a dud eget ar c'hleze.

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GENVER

SANT FRANSEZ A ZAL

(1567-1622)

Ar zant-man a deuaz er bed e kastel Sal er Savoia, er bloaz 1567. Azalek he gavel, he vizach a oa seder; he vuzellou a zigore dalc'hmad da vouse'hoarzin, he

zell a oa madelezuz: bez' ez oa henvel ouz eun ealik. Fransez a oue skoliet da genta en he vro, ha da c'houde e teuaz da skoliou Paris. D'he bemzek vloaz e studie ar filosofi, an theoloji, ar Skritur zantel ha iez an hebreed. Neuze an diaoul a glaskaz he zougen da zifi-zhout euz madelez an Aotrou Doue, oc'h ober d'ezan sonjal n'en doa ket da c'hortoz mont d'ar baradoz. Fransez en em lakeaz da bedi an Itroun Varia, o c'houlen diganti he zikour da garet Doue a greiz kaloun er bed-man, p'e guir n'en doa ket da vont da rouantelez an envou, hag a reaz le da rei he vuez da Zoue, ha da lavaret he chapelet bemdez en honor da Vam Jesus. Var an taol, melkoni he galoun a deuzaz, hag e oue leun bar a sklerijen, a fizianz hag a beoc'h.

Eun deiz, ar baotred iaouank a oa er memez skol gantan he gasaz da di eur plac'h fall evit he zougen d'ar pec'hed, met kerkent ha ma klevaz Fransez hano da ofansi Doue, e iez drouk ha kounnar ennan; divar neuze e troaz kein d'ar falz mignouned o doa c'hoant he goll. Mont a reaz da skol Padou en Itali da zeski lezennou an Iliz ha lezennou ar vro. Da c'houde, er bloaz 1591, ez eaz da bardouna da Roum ha da Lorett: dirak skeuden an Itroun Varia e reaz a nevez ar veu da drei kein d'ar bed hag e tistroaz d'he vro d'an nevez amzer, er bloaz 1592: Fransez a oa neuze pemp bloaz var 'n ugent. Eun den kaer e oa, braz oa he zeskadurez var an oll skianchou, he zoare a oa modest ha seder, eur blijadur e oa gullet anezhan.

Kinnig a reat d'ezan eur garg huel en he vro, hag ive eun dimezi euz an dibab, met ne falvezaz ket gant Fransez lavaret ia, rak c'hoant en doa da veza beleg. He dad a enebaz outan evit he zistrei diouz ar zonz-se; met Fransez var bouez he bedi brao, hel lakeaz da rei d'ezan he asant. Beleget e oue, d'an 18 a viz kerzu, er bloaz 1593; labourat a reaz kerkent dre gomz ha dre skrid da zistrei divar hent ar gaou an dud euz ar vro a oa bet touellet gant ar brotestanted. Gullet e veze atao o vont da brezeg en han' Doue da gement leac'h ma oa eneou da zavetei; sevel a rea var an torgennou,

var ar menezioù, en despet d'an amzer fall. Piou a lavar he skuizder, he boaniou; ped guech e oue e riskl he vuez?

Fransez a glaske tro da gelen an doktored protestant evit dislavaret ho gevier, ha rei d'ezo da anaout ar guir feiz. Kement e poanie, diskouez a rea kement a garantez, a zousder, ma teuaz a benn da lakât daouzek mil protestant ha tri-ugent da zistrei d'ar relijion gatholik. Ar c'hardinal du Perron a lavare: « Gouiziek » aoualc'h oun evit dislavaret ar fals-prezegerien-ze; » met Fransez a Zal a oar ar guella, dre he zousder » tizout eün an eneou, hag ho gomit d'an Aotrou » Doue. »

Pa zeuaz eskop Jenev da vervel, Fransez a Zal a oue hanvet da eskop en he blas. Neuze ec'h en em roaz muioc'h-mui da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneou, poania a reaz da brezeg d'an oll ha d'ho c'hatekiza.

Eun deiz e teuaz da Paris, ha dre gear ne oue hano nemet euz he zantelez, hag euz he brezegennou. Roue Frans, Henri IV, a ginnigaz d'ezan henoriou braz, met ar zant a lavaraz nan. Sant Fransez, evit kreski gloar Doue er bed-man, a zavaz Urz leanezed Visitation ar Verc'hez Vari, hag a lakeaz santez Jeann a Chantal e penn an Urz nevez-se. Skriva a reaz ive levriou leun a sklerijen, a zantelez hag a draou kaer.

Levr « Ar Vuez devot » ha levr « Karantez an Aotrou Doue », a zo brudet meurbed: nag a c'hoant en doa da velet Doue karet, meulet, ha servichet gant an oll! Aliez e veze klevet o lavaret: « Oh! peger mad, peger kaer eo » kaloun Jesus! Pegement e tle beza karet! ar Zent ne » c'hellint ket choum hep he garet hed an oll eternite! » Va c'haloun na c'houlén nemet he garet ha beza karet » gantan, rak an Aotrou Doue hor c'har guelloe'h eget » eur vam. Oh! na karet a rafen-me beva da viken e » karantez an Aotrou Doue! »

Bez' e oa pemp bloaz hag hanter kant pa gouezaz klanv e kear Lyon. D'an deiz varlerc'h e oue roet d'ezan sakramant an Nouen, ha d'an 28 a viz kerzu euz ar bloaz 1622, a greiz pedi Doue, e tremenaz.

SONJOMP ERVAD :

An dousder, hag ar guir devosion ne c'hellont ket beza dispartiet.

Eun den hag en deuz karg da gelen, a ra fall beza re laosk, met kelen gant drouk a zo falloc'h c'hoaz, rak e leac'h distrei divar an drouk, nemet lakât da veza goasoc'h ne reer ken. N'eo ket a daoliou mein pe a daoliou baz e tigas ar pastor mad he zened d'ar gear, met ho dougen a ra var he ziouskoaz.

AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ GENVER

SANTEZ MARTINA, MERZEREZ

Eur skrij eo klevet hano euz an tourmanchou iud a zivoaskaz ar verzerz iaouank-man, savet ken tener, euz eur ouen dud ker pindivik !

Santez Martina a c'hanaz e Roum: he zud o doa danvez braz, met muioc'h a feiz o doa c'hoaz eget a leve, hag e rejont euz ho mere'h eur gristenez euz an dibab. Martina a gollaz abred he zad hag he mam, met guerza a reaz kerent ar peb brasa euz he madou, evit rei ar priz anezo d'ar paour.

Alexandr Sever, impalaer Roum d'ar mare-ze, o veza goure'hemennet ma teuje an oll da ginnig ezans d'an idoloù, Martina a oue paket o pedi en eun iliz, ha digaset dirak Alexandr. « Devit ezans en honor d'an » doue braz Apollon, eme an impalaer. — Biken, eme » ar verc'hez iaouank. — Bezit fur, pe c'houi o pezo » keuz. — Ar guir furnez, emezi, a ra servicha eun » Doue hepken. » O velet ne c'helle gomit netra varni, ar barner a lavaraz: « Kasit-hi da dempl Apollon. »

A veac'h en templ, Martina a reaz sin ar groaz, hag a lavaraz ar beden-man: « Va Zalver ha va Doue, » c'houi oc'h euz krouet peb tra, hag a zo gwest da lakât an oll draou da vont e poultr hag e ludu, selaouit,

» me ho ped, goulen ho servicherez: diskouezit d'ar re
» oll a zo ama n'euz nemedoc'h hag a vefe din euz hon
respect. » Kerkent ha ma oue echu he feden ganti, e
teuaz eur c'hren douar spountuz, templ Apollon a oue
hanterbilet, skeuden an idol a oue strinket e mil dam,
hag a lazaz en eur goueza ar veleien a oa eno, ha
meur a hini euz ar baianed ganto.

Drouk ennan, an impalaer a reaz dispenn korf Mar-
tina gant ivinou houarn lem. Pevar bourreo a stagaz
gant al labour-ze, met en despet d'ho c'hrisder, ar
verzerez a joume laouen. Pa oue skuiz ar pevar-ze, e
teuaz eiz all en ho leac'h, met int-hi a oue douaret gant
eur sklerijen skeduz, hag a ziskleriaz kerkent o doa
c'hoant beza kristenien. Merzeriet e ouent ho eiz dive-
zatoc'h.

Antronoz ar plac'h iaouank a oue staget he zreid hag
he daouarn oc'h peuliu stard, ha skourjezet gant seiz
bourreo ken a oue skuiz ar re-man: Doue a gennerze
ar verzerez.

Antronoz all, Martina a oue kaset da dempl ar falz
doueez Diana, met kerkent an diaoul a dec'haz euz an
templ en eur iudal estlammuz, tan an env a goezaz var
an aoter epad ma kroze ar gurun, an templ a oue han-
ter-zevet, an idol diskaret; kalz beleien ha paianed a
oue paket dindan an idol ha lazet. En despet d'an oll
burzudou-ze, an impalaer ne zigoraz ket he zaoulagad
d'ar guir feiz.

En devez varlerc'h, ar verzerez a oue dispennet a
nevez gantan ivinou houarn, tost da c'houec'h ugent
gouli a oue digoret er c'horf-se ken tener. Ar barner a
zonje d'ezan e oa maro goude ar iudazerez-se, met
gulet a reaz edo beo, hag e lavaraz d'ezi: « Martina,
» mar kerez kinnig ezans d'hon doucou, na vezo great
» droug ebet d'it mui. — Jesus-Christ, emezi, a gennerz
» ac'hanoun, ha na henorin ket hoc'h idolou. » Drouk
» ennan ken a grene, ar barner a reaz kas ar verzerez
er prizoun.

Antronoz, Martina a oue taolet d'al loaned gouez,
met al leoned, chentiloc'h eget an dud, na rejont

drouk ebet d'ezi; da c'houde, e oue roget he c'horf, eur
vech c'hoaz; hag erfin, bannet en tan evit beza devet.
Jesus a gennerze hag a zioualle he zervicherez: an tan
ne reaz drouk ebet d'ezi, met he c'horf, dispennet ken
aliez, ne oa nemet eur gouli, penn kil ha troad.

Mez ennan, oc'h en em velet trec'het gant eur plac'h
iaouank, an impalaer a reaz he dibenna: mont a reaz
d'an env, er c'henta a viz genver 226, da reseo kuru-
nennou kaer ar guerc'hezad hag ar verzerien.

SONJOMP ERVAD :

Santez Martina a lakeaz he fizians e Doue, ha Doue he
c'hennerzaz, a reaz d'ezi beza treac'h d'an oll dourmanchou.
Greomp evel di: fiziomp e Doue hebken.

Na lakeomp ket hor fizians en dud, rak an dud n'o dezo
ket meur a vech galloud d'hor zikour, hag avechou all n'o
dezo ket bolontez d'hen ober.

Ne fiziomp ket ken nebeut ennomp hon-unan, rak hor
spered hag hor skiant a zo berr da zonjal dont a benn euz
al labourou on deuz c'hoant da ober; ne fiziomp ket zoken
var hor vertuz, rak heb Doue, n'oump ket guest d'ober an
disterra vad. Hor pec'hejou tremenet a zesk, da bep hini
ac'hanomp, peger sempl oump dre natur.

« Grit d'in, o va Doue, anaout va zempladurez evit ma
» tifiiziin anezi; met lakit em c'haloun eur fizians vraz en
» ho madelez; c'houi a c'hell va zavetei. »

AN UNAN HA TREGONT A VIZ GENVER

SANT PER NOLASK

(1189-1256)

Ar zant-man a deuaz er bed en eur maner e kichen
Castelnaudary, er bloaz 1189. A vianik en devoue eur
galoun dener evit an dud paour hag ezomek, hag e ouele
o velet ho stad reuzeudik; evit sec'ha daelou ar bugel
trugarezuz, e veze red rei d'ezan eun aluzen da gas
d'ezo.

D'he bemzek vloaz, e kollaz he dad. He vam neuze a glaskaz dimezi Per, he mab unik, met hen a lavaraz: « Mam, kroaz va Zalver Jesus a zo va c'harantez, ar » beorien a vezo va bugale, ha gras Doue va finvidigez. »

He vam o veza deut da vervel prestik goude, Per a verzaz he oll vadou evit gellout sikour ar paour. Heuil a reaz da c'houde Simon de Monfort, ha pa oue trec'het ha lazet roue Aragon, a oa enebour Simon, mab bian ar roue a oue roet da Ber da zevel. Mont a reaz eta d'ar Spagn, hag eno e klevaz hano euz krisder an Turked evit ho frizounerien kristen.

Kaloun Per a oa glac'haret o klevet pegen reuzedik edo he vreudeur var an douar estren: eun nozvez e oa o sonjal penaoz e c'hellfe ho zikour, pa zeuz ar Vere'hez Vari da verka d'ezan e tliet sevel « Urz an an Itroun Varia a Druez » evit ho frena, rak kalz vad a raje gant skoazel mam Doue. Per Nolask a ieaz da lavaret kement-se da zant Raymond Pennafort, he govesour; met ar Vere'hez e doa diskleriet ar memez tra d'ezan ive. Neuze ez ejont ho daou daved roue Aragon, Jakez I, da lavaret d'ezan mennoz an Itroun Varia, met ar roue a ziskleriaz d'ezo en doa bet eveldo kelenadurez ar Vere'hez. Ho zri neuze, leun a fizianz e skoazel Mari, a zavaz an Urz nevez.

Da c'houel sant Lauranz, Per Nolask, a gemeraz sae an Urz euz a dre zaouarn eskop Barselon, hag a reaz an tri veu a chastete, a baourentez, a zentidigez; ober a reaz ouspenn-ze, veu da zastum aluzennou evit prena ar gristenien chadennet, ha zoken da gemeret ho flas, ho chadennou, ma vije ezom evit kaout ar frankiz d'ezo. Daou zijentil a reaz ive ar memez veuiou gant Per Nolask, hag ar roue a roaz eul loden euz he balez, e kear Barselon, evit ma vije savet kenta kouent an Urz nevez.

Doue a skuillaz he vennoziou guella var an Urz-man: kement a dud a c'houenne beza digemeret ennan, ma oue red sevel kouenchou, dizale, e kement kear vraz a oa er rouantelez.

Per Nolask a ieaz da genta da vro an Turked. Prena

a reaz eleiz a gristenien, joa ennan oc'h ho guelel o tistrei laouen varzu bro Frans. Met ouspenn a reaz: poania a reaz ive da c'hounit an dud divadez d'ar relijion gristen.

O klevet komzou ar zant, o velet he vadelez hag he zantelez, kalz a Durked a c'houennaz beza badezet. Piou a lavaro pegement e labouraz eno evit frankiz ar gristenien, hag evit silvidigez an eneo?

Lakeat e oue er prizoum e kear Aljer. Met hen n'en doa nec'h ebet gant he boaniou, goasket e oa he galoun gant eun dra hebken: guelel a rea re all o c'houzantv, heb gellout ho zikour. Laosket e oue da vont kuit.

Mont a reaz da velet sant Louis, roue Frans, er bloaz 1243, met dinerzet e oa dija gant he labourou braz.

Er bloaz 1254 e kouezaz klanv, hag epad daou vloaz e tivoaskaz poaniou kriz: kinnig a reaz anezho da Zoue, a-unan gant poaniou Hor Zalver epad he Basion, evit silvidigez an eneo.

Er bloaz 1256, d'he zeiz vloaz ha tri-ugent, sant Per Nolask a rentaz he ene da Zoue en eur lavaret: « Gant bennoz ar Vere'hez Vari eo mad beva, ha dous » mervel, e servich an Aotrou Doue. »

SONJOMP ERVAD :

I. — Na braz eo karantez an den a implij he liberte, hag he vuez evit savetei an eneo! Meulomp eta sant Per Nolask abalamour d'he garantez. Na digar eo ar gristenien a zo breman var an douar! M'ou divije eun tamik karantez en hor c'halonou, ni hor befe truez ouz ar baianed paour chadennet gant an drouk-spered, e tenvlijen ar maro.

Doue a c'halv ar visionerien da vont betek enno. Ni hon deuz an dever da ginnig hon labour hag hor poaniou evit ho zilvidigez, da bedi evito, da rei an aluzen da zikour ar visionerien d'ho zavetei. Hag hen ober a rit-hu? Ha kaieret oc'h e Breuriez ar Feiz? Eüruz ar re o deuz truez, rak Doue a vezo truezuz en ho c'henver. Met ar re a vezo didruez, ne c'hellont ket fiziout e vezo Doue truezuz evito.



AR C'HENTA DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Ignas, Eskop ha Merzer

Ar sant-man en deuz bet en heurvad da veza bet kelennet gant sant Ian Avieler, desket en deuz gantan karet Jesus-Christ dreist pep tra, ha betek ar maro. He veritou hag he vouisiegez a oa ker braz, ma oue dibabet gant an ebestel, goude merzerenti sant Evod er bloaz 62, da veza an eil eskop e kear Antioch, brudet braz d'an ampoent dre niver ar gristenien a oa enni.

Gouarn a reaz an iliz-se epad tost da zaou-ugent vloaz. Epad ma renaz Trajan ne zilezaz ket he bobl, petra benag ma veze bepred e riskl he vuez, rak ar gristenien a veze lakeat neuze d'ar maro.

Pourvei da ezomou ar re baour, konsoli an dud doaniet, sklerijenna feiz an oll, ho zakramanti, setu he aked. Ker braz c'hoant en doa he-unan da veza merzer, ma lavare: « Na greidin va c'harantez guirion » aouale'h evit Jesus-Christ, nemet p'em bezo skuillet » va goad evitan. »

An impalaer Trajan, o veza klevet pegen dinec'h e prezege ar feiz, a reaz kregi er zant, hag he gas da Roum, evit beza roet e preis d'al leoned ha d'an tigréd. Dek soudard a oue karget da ambroug Ignas betek ar gear-ze.

Kerkent ha ma klevas lenn he zetans, e lavaraz gant eur joa vraz: « Grasou d'eoc'h, va Zalver! bez' em euz » erfin al levenez da rei d'eoc'h eur merk euz va » c'harantez birvidik. » Asten a reaz he zaouarn gant hast d'an ereou, pokat a reaz d'ezo; en em daoler a reaz d'an daoulin, hag an daelou en he zaoulagad e reaz he beden evit mad he Iliz.

En hent e skrivaz da gristenien Roum: « Me a zo » guinizen Doue, hag a dle beza draillet, malet gant

» skilfou al leoned. Kalz nec'h em beuz na deufent da » espern va c'horf evel ma 'z eo c'hoarvezet meur a » vech gant ar verzerien. Ma tigouesfe kement-se gannen, me a zeufe va-unan d'ho brouda, d'ho hiskina; » pardounit ar pezh a skrivan, rak anaout a ran ar mad » a golfen! Ia, a bouez-penn e lavaraz: netra ebet na » oufe va diarben da vont da Jesus-Christ, nag an tan, » nag al loenet kriz, nag ardou an diaoul, netra ne vezo » guest da viannât va ners-kaloun, va c'harantez evit » va Zalver adorabl. Mervel evitan a vezo va buez. »

Ar zant, digouezet e Roum, en em lakeaz var he zaoulin da ober da Zoue a nevez ar zakrifis euz he vuez, da bedi evit peoc'h an Iliz. Raktal goude he beden, e oue kaset var an dachen. Pa glevaz al leoned o iudal, e lavaraz a vouez huel: « Me a zo guinizen Doue, ra vezin » malet gant skilfou al leoned, da ober euz bruzunou » va c'horf eur bara pur da Jesus-Christ. » Var an heur, al leoned a oue laosket, hag a zaillaz var ar zant evel m' en devoa c'hoanteat. Klevet e oue betek he huanad diveza o c'helver Jesus. He verzerenti a zigouezaz er bloaz 107. D'an ampoent, e oue e kear Antioch eur c'hren-douar skrijuz. Kalz tud a oue mac'hagnet, ha Trajan, choumet dibistig dre eun taol ral, a roaz raktal ar peoc'h d'ar gristenien.

SONJOMP ERVAD :

Ar c'hoant en doa sant Ignas, da rei da Jesus-Christ eur merk anat euz he garantez, a rea d'ezan gouzanv gant levenez ar maro krisa. Va breur ha va c'hoar, pe seurt merk euz ho karantez oc'h euz-hu roet da Jesus-Christ? Petra oc'h euz-hu great evitan? petra oc'h euz-hu gouzanvet evitan?

Evit gounit hor c'harantez, Jesus a zo en em roet d'eomp; ha c'houi a fell d'eoc'h meritout karantez Jesus, heb en em rei oll dezan? Peger braz eürusdet eo rei ar galoun, ar c'horf, an ene da Jesus! eur mestr ken dous, ker mad! ar mignoun assur betek ar maro! eun Doue ker gallouduz d'hor paea en tu all d'ar pezh a helfemp ober, gouzanv evitan! Jesus en deuz sonjet ennomp, labouret evidomp epad he vuez. Greomp hon oberou da blijout d'ezan, da greski he c'hloar.

Sonjomp ennan aliez en deiz, ha lavaromp d'ezan da nebeuta eur vech bemdez, gant oll ners hor c'haloun: « Jesus » karantezuz, roit d'in ar c'hras da veva, ha da vervel en ho » karantez. »

AN EIL DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Gouel ar Chandelour

Ar gouel a reomp hirio, a verk daou vister braz: ar Verc'hez o vont d'an templ; Jesus he mab divin kiniget da Zoue, he Dad eternal.

El lezen goz e oa gourc'hemennet d'ar gragez, pa veze kresket an dud gantho, choum eur pennad amzer heb mont d'an templ; lakeat e oant dre al lezen e renk merc'hed ha ne oant ket pur aouale'h evit en em ziskouez en templ da ginnig eur zakrifis.

An Itroun Varia e doa konsevet dre vertuz ar Spered-Santel, hag a oa deut da veza, dre he frouez, splannoc'h eget an heol, santeloc'h c'hoaz eget araok. Mam da Jesus ha guerc'hez asamblez, n'oa ket evel ar gragez all dalc'het da blega d'al lezen. Goulskoude, ar Verc'hez sakr en em lakea ken izel hag ar merc'hed all, rak kuzat a rea ouz an oll, ar burzud en doa great an Oll-C'halloudeg en he c'henver. Aouale'h e oa evithi kaout, el lidou-ze, tro da viret ar vertuz a humilite, hag ar vertuz a relijion. Ne zelle nemet ouz ar skouer a roe d'ezi he Mab he-unan, e lezen ar Zirkonsion.

Neuze e veve e Jerusalem eun den just, hanvet Simeon; lavaret e oa bet d'ezan gant ar Spered-Santel ne varvje ket araok beza guelet ar Messias. Renet gant speret Doue, e teuaz d'an templ d'ar mare m'edo eno ar Verc'hez benniget. Simeon a anavezaz dioc'htu ar c'hrouadur ma oa ar bed var c'hed anezan; leun a joa, a anaoudegez vad, beuzet he ene er garantez, e kemeraz

ar bugel etre he zivrec'h, hag e reaz ar beden: « Nunc » dimittis servum tuum Domine. » Va Doue, list breman » ho servicher da vervel e peoc'h, eüruz da veza guelet » an hini oc'h euz digaset da zavetei ar bed. »

Goude, o koms ouz an Itroun Varia, e lavaraz d'ezi: « Ar bugel-man a vezó kiriek da galz tud d'en em zave- » tei, met ive meur a hini en em gollo abalamour d'ezan » hag hoc'h ene, d'eoc'h-hu, a vezo treuzet gant eur » c'hleze a c'hlae'har. » Ar Verc'hez sakr a blegaz da volentez Doue, en eur adori bepred he brovidans en he c'henver hag e kenver he mab benniget.

Eno e oa c'hoaz eun intanvez santel, Anna, koz bras neuze; beva a rea, e templ Jerusalem, er iun hag er binijen. Meuli a reaz he C'hrouer, pa anavezaz, er Mabik bian a ginniget da Zoue, ar Zalver promettet d'an oll dud.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar Verc'hez a zeu da zenti ouz lezen ar « burifikation », petra benag ne oa ket bet douget al lezen-ze eviti. Ha ni, siouas! pe seurt digareziou ne glaskomp-ni ket da dec'het diouz lezen Doue!

Mari, er myster-man, a guz muia ma c'hell he gened dispar: bez' ez eo guerc'hez ha mam asamblez. Mont a ra d'an templ, evel ar merc'hed all, d'em em burifia. He humilite a ra d'ezi c'hoantát beza kemeret evit an distera euz ar gragez. Ha ni, siouaz d'eomp! a zo ken ourgouilluz ne c'hellomp ket gouzanv ar virionez, pa leverer d'eomp, oump tud dister ha pec'herien.

Lezen ar burifikation ne oa ket great evit Mari, ha goulskoude hi a zent ouz al lezenn-ze. Ha ni ne fell ket d'eomp miret al lezennou a zo bet douget evidomp. Mari a ra kement a blij da Zoue; ha ni, siouas! ne reomp forz evit displijout d'ezan, o tont d'hen offansi ken alies.

II. — Mari o kas he mab d'an templ a ro d'an tadou ha d'ar mamou kristen eur skouer kaer meurbet: deski a ra d'ezo kinnig alies ho bugale da Zoue, ha pedi anezan da ren anezo hervez he volentez santel. Seblantout a ra lavaret d'ezo: ho pugale a zo eun tenzor da viret, fiziet gant Doue en ho taouarn. Eun deiz a zeui e rankot renta kount, rag ho pugale a zo muioc'h da Zoue eget na zint d'eoc'h oc'h-unan.

AN TREDE DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Jildas, Abad

Jildas a zo ganet er Skoss, er bloaz 493; he dud o doa eur renk huel en ho bro. Sant Ildut a rene neuze, e Bro-Zaoz, eur skol brudet-braz; di e oue kaset ar paotr iaourank.

Jildas a gavaz, etouez ar skolaerien, daou baotr hag a dlie beza ker brudet hag hen divezatoc'h, sant Samson, kenta eskop Dol, ha sant Paol, kenta eskop Leon. Ranna a reant ho amzer etre ar beden hag ar studi. D'he bemzek vloaz e c'houennaz beza resevet e renk ar venec'h, digemeret e oue dioc'htu. E kouent sant Ildut, Jildas a oue buan skouer an oll: miret a rea ar vertuziou kristen koulz hag ar venec'h santela; ne rea nemet tri bred er zizun, ha ne eve morse nemet dour.

D'he bemp bloaz var 'n ugent e oue beleget, ha divar neuze na ehanaz da boania evit silvidigez an eneo. O veza ma rene eur vuez piniennuz, Doue a roaz he vennoz d'he labour, prezeg a rea gant kalz a frouez enep an techou fall. Labourat a reaz da genta en he vro; hiniennou a oa kristen d'ar mare-ze e Bro-Zaoz, met eur c'halz a oa c'hoaz paianed pe hanter-baianed, hag ar zant a reaz d'eur braz anezo anaout guirionez ar religion gristen.

Komzou ar zant a oa entanet ha birvidik, met ar miraklou a rea a zikoure an dud da jench buez: rei a rea ar guelet d'ar re zall, netât a rea an dud goloet a lorgnez, para a rea euz a bep seurt klenvejou.

Goude beza kelennet he genvroiz, ar zant a ieaz d'an Irland: ar vro-ze, bet ker kristen en amzer sant Patrik hag he ziskibien, a oa deut a nebeudou da laoskât er feiz. Prezeg a reaz eno gant nerz ha frouez, evel m'en doa great e Breiz-Vraz: guelet e oue hep dale ilizou ha chapelioù nevez er vro, ha menec'h santel er c'houenchou.

Distrei a reaz neuze etouez he genvroiz, d'ar Skoss: lenn a reer el levriou koz e savaz eno offisou kaer gant sikour sant Kado ha sant David, hag e skrivaz he gle-mou divar benn an dud a golle ar vro dre ho dizursiou.

Goude beza sklerijennet kalz tud dre he gentelioù, rak deskadurez ar zant a oa bras evit an amzer-ze, Jildas a lavaraz kenavezo d'he vignoned, hag a deuaz, var urz an Aotrou Doue, da Vreiz-Izel.

Treuzi a reaz eta ar vreae'h vor a zo hanvet brema ar « Manch, » hag e touaraz var ribl ar Blavet, en eul leac'h guasketet gant eur roc'h vraz. Eno e savaz eul lochen, hag e vevaz gant eun nebeudik diskibien.

Evel m'eo diskleriet e Buez sant Tremeur, d'ar 7 a viz du, ar zant a ieaz da gaout ar c'homt Konomor, mestr an Domnonee, en esper ober eur guir gristen anezhan. Ar c'homt a zelaouaz ar zant, a reaz d'ezhan promesaou kaer, met da c'houde ez eaz eneb he c'her.

Gant aon ne ve deut ar c'homt, henvel ouz eur bleiz kounnaret, d'ober drouk d'ar zant ha d'he venec'h var ribl ar Blavet, Guerok, komt Guened, a aliaz Jildas da zevel eul leandi pe gouent menec'h var he zouar d'ezhan, e Rhuys.

Ar zant a guiteaz eta he enezen evit mont e gour-enezen Rhuys, eno e savaz eur gouent euz ar re vrasa, hag e roaz d'he ziskibien eur reolen gaer a vuez. Euz a Rhuys, e reaz meur a bennad bale e bro Guened hag e Kerne, hag e savaz eleiz a gouenchou all.

Erfin dinerzet gant an oad, al labour hag ar piniennou, ar zant a ieaz da enez Houat, evit gellout mervel siouloc'h. Renta a reaz he ene da Zoue d'an 29 a viz genver, d'he zek vloaz ha tri-ugent. Eun darn euz he relegou a vez henoret e Rhuys.

SONJOMP ERVAD :

I. — Tad ha mam sant Jildas a lakeaz ho mab er skol gant eur mestr gouizieg ha santel. Perak ne rit-hu ket eveldo, tadou ha mammou kristen? Kas a rit ho pugale d'ar skol, met

an deskadurez heb ar relijion a ra muioc'h a zrouk eget a vad. Diouallit rak ar skoliou a zo enno eun deskadurez digristen, levriou difennet gant an eskibien; ne lakit morse ho pugale er skoliou-ze, var zigarez ebed.

II. — Sant Jildas a zarempredaz paotred fur, tud hag a zeuaz, koulz hag hen, da veza sent divezatoc'h. Tud iaouank, lakit evez pa joazit ho mignouned. Er skol, er penn kenta, n'euz ket nemeur a gem etre ar vugale. Trei a reer, a nebeudou, a zeou pe a gleiz, dioc'h ma vez ar mignounet a gemerer. Gant mignouned kristen, e poanier da vont var an hent mad, an eil a ro d'egile skoueriou santel; gant mignouned fall, e reder var hent ar goall dechou. Diouallit gant piou ez it!

AR PEVARE DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Andre Korsini, Eskop

(1302-1375)

Andre Korsini a zo ganet e Florans, en Itali huela. He dad hag he vam a oa tud a lignez huel; choun a rejont disher epad kalz a vloaveziou. An Aotrou Doue a glevaz erfin ho fedennou, hag a roaz d'ezo eur bugel. Kerkent ha ma oue ganet, e oue guestlet d'an Itroun Varia, hervez ar vœu great ganto.

He vam, eur vaouez a feiz, a zeskaz d'ezan abredkaer he greansou; met o tarempredi ar goall goumpagnuneziou, an dud diboel, ar c'hoariou, Andre a ankounac'heaz buan ar c'henteliou devot en devoa desket var barlen he vam. Houman troet var ar beden, melkoniet o velet ne rea mui he mab van ebet euz an aliou a roe d'ezan dalc'h-mad, ne ehane da c'houlou digant Doue hag ar Verc'hez, ober eur zell a druez var he Andre hag he lakât da zistrei var an hent mad. Kendele'her da bedi a zo beza selaouet. Eun devez m'edo Andre oc'h en em ficha da vont d'an ebat, e velaz e tirede daelou

euz a zaoulagad he vam, hag hen, d'he fedi da ziskleria petra a rea poan d'ezi. — « Va mab, emez-hi, ren a rit » eur vuez ken direol, goude m'oc'h bet gouestlet da » Vam-Doue, ma 'z eo rannet va c'haloun. »

Ar gomz-se a bistigaz kement an den iaouank, ma lavaraz: « Va mam, see'hit ho taelou, na vezint ket » kollet; pardounit d'in an displijadur am euz great » d'oc'h, ankounac'hait oun eur reuzendik; va guestlet » oc'h euz d'ar Verc'hez Vari, leal eo d'in en em » gonzakri d'he zervicha. »

Ker buan ha lavaret ez eaz er meaz, var eun da iliz menea'h Karmes; stoui a reaz betek an douar dirak aoter ar Verc'hez. Skuill a reaz eno eur mor a zaelou var he zizursiou, en em ginnig a reaz da Jezus-Christ ha d'an Itroun Varia evit mad hag evit atao. An Aotrou Doue a roaz d'ezan nerz da jench buez, ha da vont da vanac'h.

Rei a reaz merkou ken anat e oa galvet gant Doue, ma oue resevet en Urz Karmez, er bloaz 1328.

Poania a reaz da drec'hi he voall dechou, dre ar piniennou rusta; ker sioul e veze bepred, ken aketuz e oa da zonjal e peb leac'h e Doue, ma oue souezet an oll o velet anezan ken devot. Trei a rea ker flour, ken dous, ker c'houek he gomzou, ma teue atao a benn da jench ar pec'her; sikour an Aotrou Doue en devoue evit kement-se, hed he vuez. Unan euz he eontred, skoet gant eur c'hlenved hir-baduz, a oa e penn eun ti-c'hoari. Andre a reaz d'ezan entent ker brao pegement a zrouk a rea, ma oue serret an ti a zizurz.

Hen alia a reaz ouspenn, da iun c'houec'h devez, da lavaret bemdez epad seiz devez seiz Pater ha seiz Ave, hag eur vech ar « Salve, Regina. » An contr a gavaz mad an ali, a zentaz, ha kerkent ec'h en em gavaz pare diouz an eskiji a oa choumet atao d'he zieza betek neuze, en despet d'an oll louzou en doa implijet.

Ar zant-man a oue gouennet gant tud Fiesol, eur gear hag a zo eul leo vale diouz Florans, da veza ho eskop. Pa glevaz ar brud-se, e tec'haz da guzat e kouent

ar Chartreuzed. Edot var nez choaz eun eskop all, pa oue diskuillet aberz Doue gant eur paotrik tri bloaz. « Andre, emezan, a zo an eskop roet d'eomp gant Doue. » Breman eman o pedi e kouent ar Chartreuzed. »

Ar zant oc'h anaout dre eno bolontez Doue, a blegaz d'ezhi hag a oue aketuz da veza bepred eur pastor mad.

Kendalc'her a reaz da ober piniennou rust, da bedi epad hurr amzer, evit tenna var he bobl grasou puill, ha bennoz an env. Dont a rea a benn dreist peb tra da douch, da denerât kalounou ar bec'herien muia kaledet en ho dizursiou. Trei a rea var ar beden an dud digristen ha diboel; lakât a eure ar peoc'h etre enebourien touet, ne felle ket d'ezo nag en em velet, nag en em bardouni. Erfin, dinerzet gant ar binijen, e rentaz he ene eüruz da Zoue er bloaz 1375, d'an oad a zaouzek vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

I. — Mam Andre Korsini, dre he daelou hag he fedennou, a jenchaz he mab. M'e dije rebechet d'ezan he vuez direol, gant trouz, dre skandal, dre goler ha buanegez, m'e dije laosket varnan malloziou ha guall bedennou, hag hi e defe great eur zant anezan?

Mar oc'h euz bugale dizuj, dreist oll mar dint savet braz, kelennit anezo dre gaer ha gant karantez; dreist peb tra, en em erbedit ouz Doue, aspedit anezan dre ho taelou da zellet a druez outo.

AR PEMPEP DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Santez Agatha, Merzerez

Ar plac'h-man, ginidig euz ar Sisil, a zisprijaz ar bed hag ar fortuniou kaer a oa ouz he gortoz. D'he daouzek pe drizek vloaz, e reaz veu da jounn bepred guere'hez.

Kuensian, gouarner ar Sisil, karget gant an Impalaer Des da lakât ar gristenien d'ar maro, o veza klevet ober

he meuleudi, ha lavaret e oa kaer ha savet mad, a reaz d'ezhi dont d'he gaout: e'hoant en devoa gullet ha ker koant e oa ha m'hen diskleriet.

Kerkent ha ma resevaz urz ar gouarner, Agatha en em dennaz en he c'hampr, hag a reaz ar beden-man: « Jesus, va Zalver ha va Doue, gouzout a rit petra » zonjan; lenn a rit em e'haloun... e'houi a zo mestr » enni; biken mestr all ebet ne anavezo... Roit d'in ho » kras gant an nerz da rei va buez evidoc'h. » Great he feden ganti, ar plac'h iaouank a ieaz var eün dirak Kuensian. Heman, brein he galoun gant an techou fall, a zonjaz e e'helje deseo ha touella ar vere'hez iaouank, met ar zantez hen diarbennaz gant heuz. Pa velaz ne gave tu ebet da zont a benn anezi, e reaz he lakât e ti eur c'hreg griet gant ar fallagriez: koll a dlle, en ti-ze, he guere'hdet hag he feiz.

Ar paian aheurtet ne e'helle ket ober goasoc'h tra d'ezhi nag ober d'he c'haloun pur heugi muioe'h, ha den ne oufe lavaret an enkreuz, ar boan e devoe da e'houzanv epad eur miz en ti milliget-se. Ar c'hreg divezet, goude beza implijet he oll ijin evit koll Agatha, a oue red d'ezhi anzaou ne e'helle ket kaout an treac'h varni; neuze ar gouarner a e'houre'hemennaz he digas dirazan, hag a lavaraz d'ezhi rust: « Adorit doucou ar rouantelez, pe e » e'houzanvot ar poaniou krisa. » — « Ne anavezan » nemet eun Doue, eme ar zantez; ne adorin birviken » nemetan; ha prest oun da e'houzanv mil maro ken- » toc'h eget kinnig eur zakrifiz d'ho toueou faoz. »

Ar barner didruez a reaz, tra heuzuz da lavaret! trouc'ha d'ezhi eur e'hostez euz he stomok. O e'houzanv ar boan galet-se, ar zantez a lavaraz: « Den kriz » ha dinatür, n'oc'h euz ket mez da ober eur seurt tra » d'eur plac'h iaouank! »

Kaset e oue d'ar prizoun er stad reuzeudik-se, met he c'haloun a dride gant al levenez. Eun den koz, bleo guen d'ezan, a zenaz e kreiz an noz da velet ar zantez, hag a bareaz he oll gouliou.

Ober a reaz neuze da Zoue ar beden-man: « Doue oll- » e'halloudek, a zo plijet ganeoc'h kemeret soursi

» ac'hanoun dre ho madelez hep muzul, va dioual' diouz
» follenteziou ar bed abaoue va bugaleach, ha va miret
» e kreiz ar poaniou; plijet ganeoc'h digemeret breman
» va ene. » En eur achui he feden, e laoskaz eur griaden
vraz, hag e varvaz er bloaz 251, pa rene he bloaz var
'n ugent.

Da benn eun nebeud amzer goude, Kuensian, o treuzi
e bag eur ster vraz, a gouezaz en dour; ne oue ket gellet
he zavetei, na zoken kaout he gorf.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Agatha e deuz disprijet meuleidiou ha plija-
dureziou ar bed; kredi a rea stard: « N'eo ket din madou an
» douar da veza lakeat e kem gant madou an env. » Pegen
dister eo ar bed! ar zent a deu d'hen dilezel, d'hen dispri-
jout; ar re zoken a ia da heul ar bed, en em glem; lavaret
a reont n'en deuz nemet madou faoz ha goullou. Ha kredi a
rit kement-se? Daoust ha ne garit ket ar bed en desped da-ze?

II. — Pebez kouraj, pebez nerz-kaloun a ro ar relijion
gristen, pa deu eur plac'h iaouank da drec'hi ar bed. Ne
doun ket souezet, o va Doue, e rofac'h d'ho sent kement a
nerz, rak evidoc'h eo e stourmont. Ne doun ket souezet o defe
kement a galoun, pa z'eo guir int kennerzet ganeoc'h; met
souezet oun o velet pegen digaloun oun va-unan, pegen laosk
oun d'ho servicha, goude m'em euz resevet kement a c'hra-
sou diganeoc'h.

AR C'HOUECHVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Tit, Eskop

Sant Tit a zo bet gounezet d'ar feiz kristen gant sant
Paol, en amzer ma prezege ar zant braz-man an Aviel
e broiou ar Zao heol: tud ar zant a oa paianed.

Eur vech kristen, Tit en em roaz euz he oll galoun da

zikour sant Paol en he labour: da Zoue oa en em roet
hag he zervicha mad a rea. Pa 'z eaz sant Paol da Jeru-
salem d'en em glevet gant sant Per, sant Jakez ha sant
Ian, divar benn ar pezh a oa guella d'ober evit prezeg an
Aviel hag unani ar sperejou, sant Tit a 'z eaz gant an
Abostol braz.

An dud santel a iea da heul sant Paol en em zispartiaz
goude konsil Jerusalem, hag a sklerijennaz evelse
muioc'h a vroioù; sant Tit a iea neuze da gear Korinth.
Resevet e oue laouen gant kristenien ar gear-ze, nevez
gounezet d'ar feiz gant sant Paol, rei a reaz d'ezo aliou
leun a furnez. Eun tamik rouestl a oa bet savet, eur
skouer fall benag a oa bet roet, met Tit a goupezaz
an traou, ar bec'herien a ziskouezaz kaout guir glac'har
d'ho fec'hed, ha Tit a zistroaz adarre da gaout sant
Paol.

An Abostol braz en doa mall da reseo eur c'helou
benag divar benn Korinth, hag a zonje d'ezan en dije
gulet Tit e Troad araok mont d'ar Masedoan, met ar
zant n'eo em gavaz ket eno abred aoualc'h, ha sant Paol
a lavar en eul lizer e oue glac'haret euz a gement-se.
Tit a gavaz evelato sant Paol er Masedoan hg a laoue-
neaz kaloun an Abostol, o lavaret d'ezan keuz ar bec'he-
rien ha santelez guir gristenien Korinth.

Sant Paol a skrivaz neuze d'ar re-man eun eil lizer
evit ho meuli da veza bet sentuz, evit ho alia da veza
guelloc'h c'hoaz: Tit eo a oue karget da gas al lizer-
ze da dud Korinth, ha da ober eur gest en ho zouez evit
peorien Jerusalem.

Goudeze, sant Paol a lakeaz Tit da ren enez Kret a
vez hanvet brema enez Kandi, skriva a reaz d'ezan
memez eul lizer hag a zo er Skritur Zakr: merka a ra
ennan, e berr gomzou, ar peb brasa euz deveriou eun
eskop mad.

O velet peger braz karantez en deuz bet sant Paol
evit Tit, eo eaz entent peger santel e tle beza bet: ren
a reaz tud he eskopti gant furnez ha teneredigez.

Al lizer kaer a skrivaz sant Paol da zant Tit, a vez
lennet piz gant an eskibien abalamour d'ar c'henteliou

a zo ennan evito; sant Tit eo en deuz he lennet da genta, hag heuliet an aliou a zo roet ennan d'an eskibien.

Ar zant-man, goude beza sklerijennet ha kennerzet ar re all, a 'z eaz da reseo en env ar gurunen en doa gounezet.

SONJOMP ERVAD :

Sant Tit, dre he gomzou hag he aliou leun a furnez, en deuz lakeat tud Korint da zistrei var an hent mad. Komzou ar zent o deuz, gant sikour Doue, kalz muioc'h a vertuz hag a c'halloud eget komzou an dud all. O veza ma renont eur vuez reizet mad, eur vuez devot, ho oberou a zo a-unan gant ho c'homzou, ha setu perak ho c'homzou a zo ken nerzuz.

Ho furnez hag ho dousder a ra d'an oll reseo ho aliou gant respet, ober a reer ho lavarou, bale a reer var ho lerc'h en hent ar vertuziou.

Peger buan e vefe torret ar goall voazamanchou, e ve chenchet an techou fall, ma vefe tadou ha mamou, mistri ha mestrezed, tud a skouer vad hag a ali fur!

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Romuald, Abad

(907-1027)

Romuald, euz a ouen an noblans huela, a zo ganet e Ravenn, er bloaz 907, var a greder. He gerent a gare an henoriou ha ne zontent nemeur e Doue, nag en he lezen. Romuald, dre ma taremprede pennou skanv, a oue he-unan eur paotr a zizurs betek an oad a ugent vloaz. Eun devez e savaz freuz etre he dad hag unan euz he gerent divar benn eur foennek, mont a rejont ho daou d'en em ganna e duel, hag contr Romuald a oue lazec'h. An den iaouank, daoust m'en doa dizaliet he dad d'en em ganna, a oa var al leac'h. Ker strafuillet e oue gant ar maro trum-ze, ma reaz he zont da guitât ar bed, ha da ober pinijen.

Mont a reaz en cul leac'h distro ha gouez, tost d'eun ermit devot. Eno e oue eaz d'ezan ober ar pinijennou rusta, ha pedi a-unan gant an ermit. Er penn kenta, pa lavare he ofis, Romuald a fazie aliez, hag an ermit, gant eur vialen, a roe d'ezan bevech eun taolik var kostez he benn.

Gouzant a reaz pell amzer heb lavaret grik. Eun devez evelato e pedaz an ermit da skei var ar skouarn all, « rak, eme Romuald, koll a ran ar c'hlevet diouz an » tu-ze. » An ermit o velet he basianted, ne skoaz mui gant he vialen.

Goude beza kuiteat an ermit santel-ze, Romuald evit senti ouz mouez Doue, a viskaz sae ar venec'h eus a Urz Sant-Beneat, hag a oue hanvet abad. Ober a reaz d'he venec'h heuil ar reolen evel ma zoa dleet, ha dreist oll pedi mad, rak lavaret a rea: « Guell eo eur psalm » lavaret gant devosion, eget kant psalm lavaret gant » eun den hanter-gousket. »

Tad ar zant, hanvet Serj, en devoue etretant ar c'hras da vont e kouent sant Sever, e kichen Ravenn. Guall dentet e oue eno gant an drouk-spered, met pa oa varnez distrei etouez tud ar bed, Romuald a deuaz d'he gaout, hag a gomzaz d'ezan gant kement a zousder hag a nerz, ma reaz d'ezhan choum er gouent-se beteg he varo.

D'an oad a zaou vloaz ha kant, Romuald a bignaz var gern ar menezioù Appennin, en Itali. Eno e kavaz eul leac'h goloet a vez pin, ha meur a eienen zour. Ar c'homt Maldoli eo a oa pere'hen an douar-ze, hanvet Kamaldoli. E kichen unan euz ar feunteunioù-ze, e krogaz, eun devez, ar c'housket er zant. Dre he gousk e velaz eur skeul: ar postou a oa harpet var an douar hag ar beg a dize an env, menez'he guisket e guen a bigne dre ar skeul. Kerkent ha ma oue divorfilet, ar zant a ieaz da gaout ar c'homt Maldoli; goulen a reaz al leac'h-se da ober he ermitach: ar c'homt a asantaz raktal.

Guiskamant menez'he Romuald a oa bet, betek ar mare-ze, guiskamant du sant Beneat; met divar neuze ar zant a reaz d'ezo dougen eur guiskamant guen, hag

ouspenn e nevezaz var meur a dra reolen sant Beneat. Evelse e oue savet Urz ar C'hamalduled.

Karantez sant Romuald evit Jesus-Christ a oa ker braz, ma veze klevet aliez en deiz oc'h huanadi, varlere'h Hor Zalver Jesus-Christ, he garantez. Mervel a reaz d'an oad a c'houec'h-ugent vloaz, er bloaz 1027.

Raktal goude he varo e c'hoarvezaz burzudou var he vez, hag a benn pemp bloaz, d'ar 7 a viz c'houevrer, e oue savet he gorf fresk-beo, ha lakeat dindan eun aoter, en iliz abati Valde-Kastro.

KENTELIOU SANT ROMUALD

I. — Buez ar Zent a deu da douch ha da ranna va c'houloun; ruzia a ran gant ar vez pa sonjan petra o deuz-hi great, ha petra a ran va-unan.

II. — Mar karfez, Romuald, lezel gras Doue da ren en da ene, petra na rafez ket? Da benn da unan a heuliez, siouaz d'id, hag e kollez peb mirit.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar binijen vraz hag ar iuniou en deuz great sant Romuald, n'o deuz ket miret outan da veva betek an oad a c'houec'h-ugent vloaz. Goude kement-se, penaoz e c'hellit-hu kredi a teufoc'h da ziverra ho puez evit iun er c'horaiz, evit sevel dek munut abretoc'h diouz ar mintin? Pegen dous eo implija ar vuez e servich eun Doue hag a c'hoar he miret, hag he asten d'an neb a glask he c'hloar.

AN EIZVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

SANT IAN MATHA (1160-1213)

Ar zant-man a zo ganet da c'houel sant Ian-Vadezour e Faucon, eur gerik vian euz ar Provans Huella, er bloaz 1160. He dud, eureujet pevar bloaz a oa, a oue dizher eur pennad amzer: met an daou bried kristen a bedaz, ha Doue a skuillaz he vennoz varno. He garantez evit

Doue, he druez ouz an dud paour, hag he zevosion dener evit ar Verc'hez Vari epad he iaouankiz, a oa eur merk anat euz he zantelez da zont.

Goude beza studiet an theoloji e Paris, e oue beleget. O lavaret he oferen nevez, d'ar gorreou, e velaz eun eal e furn eun den iaouank, kaer meurbet, guisket e guen, hag a zouge var he zae eur groaz glaz ha ruz. A gleiz hag a zeou d'an eal, e oa daou brizounier karget a jadennou. Souezet dre ar guel-ze, ar zant a ententaz e oa galvet gant Doue da brena ar brizoumerien kouezet etre daouarn ar Mahometaned.

Evit en em lakât e stad da ober al labour-ze, ec'h en em dennaz en eul leac'h distro euz a eskopti Meaux; eno e veve dija eun ermit santel, hanvet Felix a Valois. En em glevet a rejont da veva asambles, o viret an oll vertuziou kristen. Ar vrud euz ho zantelez a reaz da galz a dud dont daveto, da c'houlen beva diouz ho skuer.

Tri bloaz a oa ma vevent el leac'h distro-ze, pa zigouezaz d'ezo gouelet o tont varzu enno eur c'haro guen, hag a ziskenne da eva dour d'eur feunteun. Var he benn, etre he gerniel, eur groaz glaz ha ruz, henvel ouz an hini en devoa guelet Ian Matha deiz he oferen genta var dillad an eal. Souezetoc'h eget biskoaz, Ian a ziskleriaz d'he vignoun ar pez en doa guelet. Divar neuze, ec'h en em glevjont ho daou d'en em voestla da denna ar gristenien euz a dre zaouarn an Turked.

Mont a rejont da Roum e miz kerzu 1197, da ziskleria ho mennoz d'an Tad Santel ar Pab Innosant III, ha klevet gantan ar pez a dlient da ober. Ar pab, bet guechall er skol e Paris gant Ian Matha, a jomaz eur pennad d'en em zonzal, da c'houlen kuzul, da lakât pedi ar Spered-Santel d'her sklerijenna. D'an 28 a viz genver 1198, epad ma oferenne en Iliz Veur sant Ian Latran, Innosant III a velaz he-unan eun eal guisket e guen, eur groaz glaz-ruz var he gere'hen, evel m'en devoa guelet Ian Matha. Ar pab a roaz raktal he aotre d'an Urs nevez, hag hen hanvaz: « Ordo sanctissimæ Trinitatis de redemptione captivorum: Urs an Drindet santel da

brena ar brizoumerien », en eur viska da Ian Matha ha da Felix a Valois ar zae ven gant eur groaz glaz-ruz var ho stomok.

Sant Ian Matha en doa eur c'hoant braz da vont d'an Afrik etouez an dud divadez, ha joa e vije bet gantan chom he-unan en ereou en leac'h eur prizounier benag, met ar Pab Innosant a zalc'haz anezhan e Roum, evit kaout he ali var an traou brasa. Daou euz he venec'h a oue kaset d'ar Maroe; en dro genta, e prenjont c'houec'h prizounier ha nao-ugent.

Ar zant, o veza lavaret nan d'ar Pab a c'hoantea he zevel e renk ar Gardinaled, en devoue erfin aotre da vont d'an Afrik. Eno e oue goall-gaset gant an dud digristen, met bez' en devoue ive ar joa da gonsoli ar brizoumerien, d'ho c'hrenvat er feiz, ha da derri chadennou an darn-vuia anezo.

Distrei a reaz da Roum. Petra benag ma oa eat dister he nerz, e tremenaz an daou vloaz diveza euz he vuez o prezeg, o vont var dro ar brizoumerien, oc'h entent ouz an dud klanv, o tiskouez truez evit ar beorien, hag o c'houmit eneou da Zoue. Erfin dinerzet oll, skuizet gant al labour, devet gant tan he garantez evit Hor Zalver, ar zant a rentaz he ene pur da Zoue, e Roum, d'ar 17 a viz kerzu euz ar bloaz 1213. Bez' e oa vardro tri bloaz hag hanter-kant.

SONJOMP ERVAD :

Anavezomp ervad ar garantez en deuz bet ar zant-man evit ar brizoumerien, en eur labourat gant kement a skuider d'ho asprena. Ma ne c'hellomp ober kement-se, sikouromp da viana hon nesa en dienez, er pezh a vezo eaz d'eomp. Na oufemp ket ober eun dra hag a blijfe muioc'h da Jesus-Christ, rak lavaret a ra d'eomp ne laosko ket heb digoll eur verennad zour hebken, roet d'ar paour dre garantez evitan.



AN NAVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Syrill, Eskop

Ar zant-man, niz d'eun arc'heskop, ha ganet er bloaz 376, a oue savet e doujans Doue gant he dud. Deski a reaz, en he iaouankiz, an oll skianchou a c'hellet da anaout en amzer-ze, met poania a reaz dreist peb tra da zeski guirioneziou ar relijion e skridou an doktored kristen.

He zeskadurez hag he zantelez a oa ker braz ha ken anavezet ma oue savet d'an 18 a viz here euz ar bloaz 412, d'he c'houec'h vloaz ha tregont, var gador arc'heskibien Alexandri. Kerkent ha ma oue hanvet arc'heskop, an teodou fall a glaskaz dua anezan, met gant an amzer e teuz an dud da anaout e oa bet tamallet e gaou.

Sant Sirill, savet gant ar Pab Leon XIII e renk doktored an Iliz, en deuz poaniet dreist oll da sklerijenna ar baianed, ha da ziarben heresi Nestorius.

En amzer ar zant-man, e kavet c'hoaz eun nebeudik paianed en Ejipt. Ne oant mui stank, rak ar relijion gristen a oa en em zilet a nebeudou etouez an dud; chom a rea evelato hiniennou, ha ne felle ket d'ezo digeri ho daoulagad da sklerijen ar guir feiz. Ar zant ho c'helennaz dre he brezegennou, dre skouer eur vuez santel, hag ive dre he bedennou.

E kaloun an Ejipt e kavet eur bourk hanvet Manutha, leun a baianed: ne reant nemeur a van, kaer a oa prezeg d'ezo. Sant Syrill en em roaz d'ar beden, en eur c'houlenn digant Doue eneou ar baianed paour-ze. Eun devez ma pede c'houekoc'h eget biskoaz, eun eal en em ziskouezaz dirazan: « Kasit, emezan, er bourk-se » relegou ar merzer Syrus ha re an avieler sant Mark. »

An arc'heskop santel a heuliaz an ali a oa roet d'ezan, hag a gasaz buan ar relegou santel d'ar geraden. Doue a reaz kerkent kalz miraklou eno, dre vertuz

ar relegou sakr, hag an oll baianed a droaz kein d'ho idolou evit heuil relijion Jesus-Christ.

Labour braz sant Syrill a oue evelato diarben falz kredennou Nestorius, eskop ha patriarch Konstantinopl. Nestorius a lavare ez euz daou bersonach e Jesus-Christ, persounach mab Doue ha persounach an den, hag o veza ma 'z eo ar Vere'hez Vari mam an den ha netra ken, n'euz guir ebet da ober mam Doue euz an Itroun Varia.

Kristenien Konstantinopl a sklazaz ho goad en ho e'hreiz pa glevjont ar blasphem spountuz-se, hag a ziskuliaz lavarou ho eskop. Ar veleien gouizieka a zisplegaz ar virionez dirak daoulagad ho mestr, met Nestorius a oue braz gantan beza kenteliet gant ar re a oa dindannan.

Ar re-ma a skrivaz neuze d'ar Pab ha d'an eskibien katholik.

Sant Syrill, goude beza lennet blasphemou eskop Konstantinopl, a skrivaz d'ezan eul lizer karantezuz hag a verke sklear ar guirioneziou a dle beza kredet gant ar gristenien divar benn an Inkarnasion ha divar benn ar Vere'hez. Nestorius ne reaz van euz a lizer eskop Alexandri; hema neuze a skrivas d'ar Pab.

Ar Pab a ziskleriaz edo ar virionez gant eskop Alexandri, hag a daolaz an ekkommunugen var Nestorius. An heretik na blegaz ket. Neuze ar Pab a reaz d'an eskibien en em voda e kear Ephes, hag eno Nestorius a oue koundaonet adarre.

Epad an anzer-ze, Syrill a oa distroet da Alexandri: poania a reaz da lakât ar peoc'h hag ar garantez da ren etouez he gristenien; mervel a reaz d'an 28 a viz even euz ar bloaz 444.

KENTELIOU SANT SYRILL

I. — Sakramant an Aoter a bare klenvejou an eneo, moug a ra ar goall ioulou, hor c'hennerza a ra en tentasionou.

II. — Ar Vere'hez Vari a ra levenez an elez, a ra d'an drouk-sperejou tec'het; an neb a laka he fizians enni ne 'z ai ket da goll.

III. — An oll vertuziou a zo diazezet var an humilite.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant braz-man a boaniaz da sklerijenna sperejou ar re oll a oa bet fiziet ennan gant an Aotrou Doue. Eun eskop, eur beleg ne c'hellont ket mont d'ar baradoz ho-unan evel an ermited, red eo d'ezha savetei kalz eneo evit kaout dorigor e palez an Aotrou Doue. Hep beza beleien, ar gristenien a dle ive sikour ho nesa da vont d'an env.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Santez Skolastik

(480-543)

Santez Skolastik, c'hoar da zant Beneat, a zo ganet e Norsia, kearik vian euz an Itali. Prest goude ma teuaz var an douar, he mam a varvaz. He zad, eun den a zoujans Doue, a zeskaz d'ezi abred he c'hreansou, en hevelep doare ma rea fae var ar c'hoariou evit selaou he zad o komz d'ezi euz a Zoue, hag euz an eürusdet a gaver en he zervich. Pinvidik braz, speredet kaer, ar vere'h a gare beza he-unan, en eul leac'h didrouz benag.

Ar fougou, an dillad a lufr n'o deuz biskoaz plijet d'ezi, rak klevet e devoa ouспен kant guech gant he zad: « N'eo ket ar ficha brao eo a ra ar mere'hed fur. » Ar c'haera meuleudi a oufet da ober euz eur plac'h, » eo lavaret ez eo eur vere'h modest ha devot. »

O veza klevet komz eus ar vuez santel a rene he breur Beneat e kouent menez Kassin, e savaz c'hoant ganti en em denna euz ar bed ha mont da leanez. Sonjal a rea e tlie beza ken douget hag he breur da glask ober he zilvidigez, setu ma kuiteaz he zad evit mont da velet he breur, ha da glevet gantan penaoz en em gemeret evit ren eur vuez santel, rag hi ive e devoa c'hoant braz da veva en eur gouent. Ar breur, goude beza he desket mad

var he deveriou, a roaz d'ezi eur reolen a vuez, tost da vad ar reolen en devoa skrivet evit ar vene'h. Santez Skolastik a viraz ar reolen-ze heb mank ebet; hag eun niver braz a vere'hed a deuz davedi, ha da c'houlen beva a-unan ganti.

Ar guere'hez, dalc'hmad o sonjal en doare da blijout muioc'h-mui d'an Aotrou Doue, a zeuz buan da ankounac'hât ar bed hag he follenteziou. Ar beden a galoun ne ehane na deiz na noz. Al leanezed na gomzent morse an eil ouz eben; kazi hed ar pevar benn euz ar bloaz e iument. Ar binijen a oa rust. Ho c'hampr ne oa kouls lavaret nemet eun toullik; an arreubeuri, ar bevans, ar guiska a oa dister ha paour dreist. Setu aze penaoz e oa er penn kenta an Urz kaer-ze, en deuz savet betek pevarzek mil ti leanezed. Er c'houchou-ze e kaver c'hoaz eun niver braz a vere'hed euz ar renk huella, prinsezet zoken, hag o deuz evit Jesus-Christ troet kein da blijadureziou ar bed.

Santez Skolastik a iea eur vech er bloaz da velet he breur Beneat, da renta kount d'ezan euz he buez he-unan, hag euz an doare ma vire al leanezed he reolen. Sant Beneat n'oa ket evit gouzanv e teuje he c'hoar betek ar gouent, rak-se gant eur manac'h all e teue d'he diambroug betek eul lochen savet e traon menez Kasin, en hanter 'n hent etre an diou gouent.

Eaz eo gouzout peger santel e oa etre ar breur hag ar c'hoar ar veladen-ze, rak o daou o devoa en ho c'haloun eur garantez birvidik evit Doue. Ne gomzent nemet euz a Zoue, euz he vadelez, euz he drugarez en ho c'henver. Sant Beneat a roe d'he c'hoar an diverra euz ar grasou en devoa bet digant Doue. Santez Skolastik d'he zro a zisklerie d'he breur e oa Doue bepred mad-dreist e kenver he leanezed. Evelse en em harpent an eil egile da zervicha guelloc'h-guell ho mestr muia karet.

Ar zantez a rentaz he ene pur da Zoue var dro ar bloaz 543. Sant Beneat, e kreiz he bedennou, a velaz ene he c'hoar o pignat d'an env dindan furm eur goulm.

KENTELIOU SANTEZ SKOLASTIK

I. — Eun den hag a joum sioul a viro eaz oll lezennou an devosion guirion.

II. — Eun devez implijet mad o servicha Doue a dal muioc'h d'comp, eget mil devez lakeat da zastum madou ar bed.

SONJOMP ERVAD :

Ar gaozeaden a rea santez*Skolastik gant he breur eur vech er bloaz a oa eur skouer vad. Ne gomzent nemet euz a Zoue, hag euz he garantez. P'en em gavit gant re all, ha komz a rit-hu euz a draou mad? Ar re na zivizont etrezo, nemet euz nevezentiou ar bed, pe a zo bepred oc'h abegi heman hag hounez, ouspenn ma kollont ho amzer, a zo e riskl da goueza e meur a faot, hag e meur a bec'hed, ma na lakeont ket evez mad.




AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Apparision ar Verc'hez e Lourd

D'an 11 a viz c'houevrer euz ar bloaz 1858, teir verc'h paour a oa o keuntea tost d'eur roc'h kleuz hanvet Grott Massabiell. Diou o doa treuzet eur voazen zour; an drede, Bernadett Soubirous, a oa o tenna he lerou, pa velaz, en eun toull huel er roc'h, eun Itroun, koant evel an deiz ha skeduz evel an heol. Ar Verc'hez Vari e oa. Ar baotrez vian a gouezaz d'an daoulin, hag a grogaz en he chapeled: an Itroun a zeskaz d'ezi ober mad sin ar groaz, epad ma vouze'hoarze dudiuz d'ar verc'hik; he zae hag he goel a oa guen evel an erc'h, he gouriz glaz evel an oabl: eur rozen aour-flamm a oa var bep troad d'ezi.

Ar verc'hik a velaz an Itroun trivac'h guech. En diou vech kenta, an Itroun Varia ne gomzaz ket, c'hoant e doa e teufe Bernadett da hardisât outi, met en drede guech e c'houlennaz diganti dont bemdez d'ar Grott epad pemzek dez. Laouen-braz, ar baotrez a lavaraz ia. Kerkent, ar Verc'hez madelezuz a roaz he ger d'ar verc'h paour: « Me ho rento eüruz, n'eo ket er » bed-man eo, met er bed all. » Pebez promesa kaer, euz perz rouanez an env hag an douar, d'eur verc'h dizesk ha ne ouie na lenn na skriva, d'eur baotrez keaz ha ne doa ket atao a vara da zibri dioc'h he naon.

En troiou kenta, ar Verc'hez benniget a ziskleriaz da Vernadett pedennou ha kuzulioù hag a zelle outi heunan hebken, met da c'houde e tiskleriaz d'ezi he goulennoù d'ar bobl kristen: ober pinijen, pokat d'an douar evit distro ar bec'herien ouz Doue, sevel eur japel evit ma teuje an dud d'ar Grott e prosesion. Hag evit merka sklear d'an oll eo red dreist pep tra pedi, an Itroun Varia n'en em ziskoueze nemet p'e deze ar plac'hik lavaret eur pennad benag euz he chapeled.



D'ar 25 a viz c'hoevreur, ar Verc'hez trugarezuz a reaz d'he zervicherez muia karet digeri eun eienen er Grott, tud a oue pareet prestik goude gant an dour-ze; hirio, n'euz bro ebet var an douar ha ne vefe ket enni tud ha kalz tud hag o deuz kavet ar iec'hed en dour burzuduz-se. Redet a ra heb ehan, hag an eienen-ze a zo eur merk euz ar grasou dispar a vez roet gant Doue e Lourd d'ar bardounerien.

D'ar 25 a viz meurs, an Itroun a ziskleriaz he hano da Vernadett. Betek neuze, an dud a zonje ervad eo ar Verc'hez en em ziskoueze er Grott, met ne doa ket diskleriet he hano; da c'houel Maria-Veurs (25), goude m'e devoue ar baotrez vian goulennet teir guech he hano diganti, e respountaz: « Me eo ar Gonsepsion » Dinam. »

Ar burzudou a c'hoarvezaz er Grott; ar re glanv a oue pareet eno en eun taol kount, a vrudaz hano Lourd dre ar bed oll. Ar pennou braz a glaskaz da genta enebi, met ar burzudou a oa re sklear ha re stank: an dud a zirede euz a bep leac'h d'ar Grott.

Aotrou 'n Eskop Lourd a ziskleriaz, e miz genver 1862, e oa e guirionez en em ziskouezet ar Verc'hez Vari da Vernadett Soubirous e Grott Massabiell, hag e c'hellet kredi lavarou ar plac'hik, rak kalz tud a oa bet pareet dija.

Ar Verc'hez e doa goulennet eur japel digant ar veleien, ar gristenien o deuz roet laouen ho aluzen, hag ez euz bet savet, var douar ar Grott teir iliz kaer; ouspenn-ze, kourmpezet eo bet an douar tro var dro evit ma vije eaz d'ar bardounerien ober ho devosionou.

Pa c'houlenne eur japel ha prosesionou, ar Verc'hez a verke sklear e doa c'hoant e renfe ar beden heb ehan er plas choazet ganti; hag e guirionez, mouez ar beden a zav noz deiz atao, euz Lourd varzu an env. An oll broiou a gas tud da bardouna d'ar Grott; e kement leac'h ma 'z eo anavezet ar relijion gristen, e ouzer eo e Lourd e vez roet kaerra grasou an Aotrou Doue.

Ar Verc'hez a c'houlenne pinijen, hag e Lourd e kemerer poan. Ar re glanv a gemer poan da vont beteg

eno, ar re iac'h a gemer poan da zikour anezo, da bedi evitho hag evit ar bec'herien, ha da bokat d'an douar evito.

An dud pinvidik a vez eno gant ar re vella da entent ouz ar re glanv, ha da zouba anezho en dour burzuduz.

Ar Pabed o deuz diskouezet ho respet evit ar Verc'hez, en eur rei induljansou braz d'ar re a 'z a da Lourd gant devosion; an Tad santel a zo breman, Pie XI, a zo bet diou vech o pardouna e Massabiell arok m'eo bet savet var gador sant Per.

SONJOMP ERVAD :

Ar Verc'hez benniget a ro grasou dispar e Lourd: klask a ra savetei an eneo o rei ar pare d'ar c'horfou, klask a ra savetei bro Frans.

Eur c'halz euz an dud a zo breman e kear, meur a hini euz ar re a zo var ar meaz, o deuz c'hoant nac'h ez euz eun Doue; pareansou Lourd a lavar d'ezo freaz ha sklear: « Eo, » eun Doue a zo. »

It, pa c'helloc'h, da bardouna da Lourd; grasou o pezo.

AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Ar Seiz Breur Devot

Er bloaz 1233, eur rum dud, devot braz d'ar Verc'hez, a gane deiz gouel Hanter-Eost meuleudi an Itroun Varia en eur japel e Florans, p'en em ziskouezaz rouanez an env hag an douar da bep hini anezo. Ar Verc'hez benniget a c'houlemmaz diganto servicha anezi parfetoc'h eget an dud all, hag ar seiz kenvreur a zelaouaz he mouez, hag en em glevaz, ken etrezo, goude an offis.

Klask a rejont, er meaz euz kear, eun ti sioul ha didrouz; eno e rejont ho zonj da veva er beden. Guerza a rejont kement tra o doa var ho hano, hag hi pinvidik goulskoude, rak eur renk huel o doa oll; ranna a rejont priz ho leveou etre ho zud hag ar beorien. Da c'houde,

ar seiz den santel a viskaz dillad dister, mezer gros evel ma vez gant ar re baourra, hag en em roaz da zervicha Doue a greiz kaloun.

Bloaz benag e vevjont er giz-se en ho zi paour; pep hini anezo a rea ar piniennou a blije d'ezan, heb ma vije red d'ezo heuil reolen ebet. Pa oue ahu ar bloavez kenta, e savaz nec'h var ho spered: an dud a zeue d'ho guelet, hag a zistranse anezo divar ho fedennou; ouspenn-ze, hiniennou a oa e riskl da goll ho iec'hed, ker kalet e oa ar vuez a renent. Setu ma 'z ejont da c'houloulen kuzul digant an aotrou 'n Eskop.

Eskop Florans a lavaraz d'ezo: « Tee'hit pelloc'h euz » kear, me a roio d'eoc'h eun dorgen hag a zo diou » leo vad ac'han: eno e vezo eaz deoc'h beva hoc'h-unan ». Ar seiz Breur (ne oant ket breudeur dre ar goad, met dre ar garantez a zougent an eil d'egile) ar seiz Breur a heuliaz an ali: mont a rejont d'an 31 a viz mae 1234 d'ar roz a oa roet d'ezo; kenta a rejont a oue sevel eno eun iliz, hag ober seiz ermitaj tro var dro d'ezi.

Eno e tremenent ho amzer er beden, er iun, er binijen; kana a reant gloar ha galloud Krouer an env hag an douar, gouloulen a reant digant ar Vam a drugarez, ar Vere'hez Vari, ho mestrez, skuill grasou Doue varno ha var an oll. Hi, bet guehall pinvidik braz er bed, a veve divar an aluzennou a roe d'ezo an dud vad; sevel a rejont eur reolen a vuez evito ho-unan, hag evit ar re oll o defe c'hoant da zervicha evelo Doue hag ar Vere'hez. An Itroum Varia eo a verkaz d'ezo ar reolen a vuez a dlient da heuil, setu perak ar seiz den santel o doa muioc'h a galoun da gerzet dre an hent merket d'ezo.

Sevel a rejont huel-huel var hent ar zantelez, ha Doue a vennigaz ho fedennou, o lakât kalz a dud da c'houloulen diganto anaout skiant ar zent. Savet e oue, n'eo ket hebken lochennou, met tiez braz evit digemeret an dud a volonteaz vad o doa c'hoant miret reolen Urz Servicherien Mari, ha pa varvaz, er bloaz 1310, an diveza euz ar Seiz Sant, d'an oad a zek vloaz ha kant, e oa dija dek mil manac'h en Urz.

Euz Urz Servicherien Mari ez euz bet lakeat meur a hini e renk ar zent, met ar Seiz o deuz savet an Urz a zo bet henoret, e peb amzer, evel mignouned braz da Zoue.

Ar Pab Beneat XIII en deuz diskleriet ar Seiz Breur eüruz, hag ar Pab Leon XIII en deuz ho zavet e renk ar zent, ha goure'hemennet ma vefent henoret dre ar bed oll.

SONJOMP ERVAD :

An oll n'int ket galvet gant Doue d'en em denna pell euz ar bed, evel m'o deuz great ar zent-man; eur c'halz euz an dud a dle gounit ho c'hurunen er baradoz o poania e mesk tud ar bed. Meur a hini, galvet gant Doue da vont d'ar gouent, a joum er bed, ha dre-ze en em laka e riskl braz da goll ho ene. Eur c'hrouadur a vez peurliesha galvet ez-iaouank d'en em rei da Zoue: kenta guech ma ra hano euz a gement-se d'he dud, ar re-man a c'hell enebi epad eur pennad amzer, evit guelet ha stard eo c'hoant ar paotr pe ar baotrez. Met eun tad, eur vam ne c'hellont ket enebi re bell, heb pec'hed, ouz gouloulen ho c'hrouadur: rak da Zoue eo, araok beza d'ezho.

Eun dra vad eo, mar bez eaz kement-se, ober d'ar paotr iaouank, d'ar plac'h iaouank heuil eur retred en eun ti santel benag; eno e kavo sklerijen ha nerz evit bale difazi var hent ar baradoz.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Polyeuct, Merzer

Er bloaz 259 e veve en Armeni, daou zen a vrezel, mignouned bras: Nearth ha Polyeuct. Ar c'henta a oa eur c'hristen stard, an eil a oa paian: ren a reant ho daou eur vuez a skouer vad.

Pa c'houre'hemennaz impalaered Roum klask ar gristenien hag ho lakât d'ar maro, Nearth a grenaz evit he vignoun: « Me a vezo barnet d'ar maro, emezhan, met hen, petra deuio da veza? » Ha Nearth a gave dies, abalamour ne oa ket kristen he vignoun.

P'en em gavas Polyuect gant Neark e oue souezet: « Perak, emezan, eo ken tenval da benn? daoust ha poan am be great d'id? — Nan zur, eme egile, met dies e kavvan, rak ar maro hon dispartio dizale. An impalaered o deuz lavaret huel: « Ar gristenien d'ar maro, nemet nae'h a rafent ho feiz! »

Polyuect a respountaz: « Va mignoun, ar maro n'hon dispartio ket, rak guelec em euz ar C'hrist a adorez o tont davedon, o tiffamma divar va diouiskoaz ar e'hoz mantel a zo ganen, hag o rei d'in eur guiskamant skedus evel an heol. Staga a reaz va mantel gant eur spillen aour, ha da e'houde, e roaz d'in eur mare'h askellek. — Daoust hag anaout a rez Jesus? a e'houlenmaz neuze Neark. — Ia, he anaout a ran mad, eme adarre he vignoun. Daoust ha choum a e'hellen heb he anaout? Te a veze o komz d'in anezan heb ehan. Pa lenne he aviel d'in, e oan souezet o velet peger kaer eo he genteliou. Pell zo oun kristen em e'haloun, heb m'em befe resevet ar vadiziant. Evelato, mignoun, ro d'in sklerijen var em nebeudik kenteliou euz an aviel hag am euz kavet dies da entent. »

Neark, laouen braz, a genteliaz he vignoun. « Ar re, emezhan da e'houde, a gred e Jesus, a e'hell gounit eur gurumen gaer er baradoz, gant m'o dezo e'hoant reseo ar vadiziant. Ar mare'h askellek e peuz guelec, ar guiskamant kaer a zo bet lakeat var da ziouskoaz, a verk d'in e tle beza kurunet unan ac'hanomp. — Guell a-ze, eme neuze Polyuect, mar deo me eo a dle nijal d'an env var ar mare'h-se. Deomp buan, emezhan, da len urz an impalaered. »

Kerkent ha ma velaz an urz-se, Polyuect a rogaz anezan, hag a stlapaz an tamou d'an avel. Epad ma selle ouz ar paper o nijal kuit, e velaz paianed o tougen skeudennou an doueou foz var an aoteriou savet evith e kreiz al leur-gear. Tostât a reaz outo var he boezik, met kerkent ha ma e'hellaz kregi en idolou, e vruzumaz anezho var an douar.

Tad kaer Polyuect a oa gouarner kear. Pa velaz labour he vab kaer e oue rannet he galon, hag e klaskaz

ober d'ezan adori an doueou evel m'en doa great betek neuze. « Nan, nan, eme Bolyuect, ahu eo. Me a zo d'ar C'hrist, rak hen eo en deuz sklerijennet ac'hanon. »

Pried ar e'hristen nevez a deuz d'he zro, gant he zad, da glask ober da Bolyuect mont var he giz, met hen a joumaz stard en he feiz, en despet da zaelou he e'hreg. « Selaou eun dra ganen, Paulin, emezhan, tro kein d'an idolou m'e peuz e'hoant kaout ar vuez a bado da viken. Ar vuez-man a zo re galet evit an den, poania a dleomp da e'hounit baradoz ar C'hrist. »

Etretant, ar baianed a iea eun drouk braz enno. Guelec a reant an dud tennerreat gant komzou ar e'hristen nevez, ha gant aon na vije deut muioc'h a baianed e'hoaz da drei gantan, e rejont buan he varn d'ar maro. Met Polyuect na reaz koulz lavaret van ebet evit klevet ar zetans douget gant ar barner. Er e'hountrol eo, laouenoc'h e oue da velet prestik goude. « Guelec em euz, emezhan, eun den iaouank euz ar re gaera o tont davedon, hag o lavaret d'in: « Arabat eo d'id staga da galon ouz traou ar bed-man, traou a netra. »

Pa oa o vont d'ar maro, Polyuect a oa laouen evel an heol, evelato, pa deuz da zonz d'ezhan euz he vignon Neark e teuaz he benn da viska eul liou tenval. Met guelec e oue dizale ar mignoun-ze o tont var hent ar merzer, ha neuze heman a oue laouen adarre. « Bez den a galon, emezhan da Neark; ha dalc'h sonj mad ac'hanon. »

Ar merzer a astennaz he unan he e'houzoug d'ar bourreo evit reseo taol ar maro.

Ar gristenien a oa var al leac'h a zougaz gant respet korf ho Breur da gear Meliten, en Armeni. Neark a ruziaz eun tam lien fin gant goad ar merzer, hag a viraz al lien-ze evel eun tenzor. Hen eo, dioc'h ma lavar an historiou koz, eo en deuz skrivet merzerenti he vignoun.

SONJOMP ERVAD :

Pegen talvoudeg eo kaout eur mignoun mad! Nag a vez a ra d'eomp lod euz ar baianed! Savet int, en eun taol, da veza kristenien dispar, ha ni, ganet er relijion gristen, ni maget aliez gant ar communion zantel, a joum ken dibarfet! Eur vez eo evidomp!

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Valantin, Merzer

Sant Valantin a veve e Roum: he furnez a oa ker braz, ken anavezet, ma oa henoret, n'eo ket hebken gant ar gristenien, met c'hoaz gant ar baianed. He garantez a oa dreist: rei a rea kement en doa d'ar paour. Prezeg a rea an Aviel ker freaz, ma sklerijenne ar baianed aheurtet. He zoare a oa ken humbl, he goms ken izel, ken dous, ma tirede an oll da zelaou he brezegennou: eur c'halz en em roe da Zoue.

An impalaer Glaoda, o veza klevet lavaret e oa eun den fur ha gouiziek braz, a c'hoanteaz he velet, hag a reaz he glask. Ober a reaz d'ezan eun digemer mad; evelato e lavaraz e kave diez, abalamour ma c'henille Valantin eur relijion kountrol-beo da zoueou ar rouantelez. « Prins, a respountaz ar zant, ma anavesfac'h an » Doue a adoran, hag a zervichan, c'houi a vije re » eüruz da gaout eun hevelep mestr. »

An impalaer a reaz d'ezan kalz goulennoù var ar feiz. Ar zant a ziskleriaz freaz ar pez a zo red da gredi evit beza salvet. He respounchoù a oa ker stard, ker c'houek ma oue dare d'ezan gounit an impalaer; met prefet kear Roum, Kalpurnius, a enebaz; lavaret a reaz d'an impalaer: « Ma kredit e Jesus-Krist, ha ma ne goundaonit ket » Valantin, ar bobl oll en em zavo en hoc'h enep, ha » c'houi a vezo diskaret. » Glaoda a oue nec'het eur pennad, met moug a reaz gras Doue, hag abalamour na grede ket koundaoni ar zant, e kemennaz d'ar barner Asterius barn anezan.

Asterius a reaz da Valantin dont d'he di, evit respount d'he c'houlennoù.

O taoler he droad dreist treujou an ti, ar merzer a zavaz he zaoulagad etrezek an env: « Salver adorabl, » emezan, skuillet oc'h euz ho koad presiuz evit save- » tei an oll dud, plijet ganeoc'h dre sklerijen ar feiz, » sklerât spered kement hini a zo en ti-man. », »

Ar barner a c'houlennaz petra a verke ar c'homzouze. « Gouezit ervad, Asterius, eme ar zant, ez eo Jesus- » Christ guir Doue ha guir den; ha dirazan ho toueou » oll ne dint netra. Jesus-Krist a zo ar sklerijen a zeu » da bara var gement den a zeu er bed. » — « Gue- » lomp, eme ar barner, ha guir eo ho komzou. M'em euz » kemeret eur vinorez hag a zo dallez. Mar grit d'ezi » gullet dre vertuz Jesus-Christ, me a resevo ar vadi- » ziant. » Valantin a reaz he beden gant eur feiz krenv, hag eur fizianz vraz. En eur ober sin ar groaz var daoulagad ar c'hrouadur, e lavaraz: « Jesus, va » Zalver, guir Doue an eny hag an douar, guir sklerijen » ar bed, plijet ganeoc'h selaou peden eur pec'her » paour, ha rei ar gullet d'ar c'hrouadur-man. » Raktal ar vere'h a rekouraz ar gullet. Asterius, sklerijennet he ene gant eur mirakl ker kaer, a c'houlennaz ar vadi- ziant: gantan, he c'hreg hag oll dud he di, pevar ha daou-ugent anezo, a droaz kein d'an idolou. An darn vuia anezo a skuillaz divezatoc'h ho goad evit Jesus-Christ. Neuze e oue karget eur barner all da gas prosez Valantin da benn. Heman her c'houndaonaz da veza dibennet var dro ar bloaz 273, d'ar 14 a viz c'houevreur.

SONJOMP ERVAD :

Sant Valantin a reaz d'an impalaer Glaoda anaout guiriñez ar relijion gristen; met gant aon da zisplijout d'eur bobl paian, ha da goll he c'halloud, heman a vougaz ar sklerijen-ze, hag a joumaz paian: daoni a reaz he ene, renons a reaz d'he zilvidigez ha d'eur rouantelez eternal. Pebez koll!

Ped den siouaz! ne gaver ket c'hoaz hirio, ha gant aoun da zisplijout d'ar bed, d'eur mestr, d'eur mignoun, a zeu da vouga ar zonzonou mad, da verza ho c'houstians, ha da goll ho ene?

O dallentez ar pec'her!

Aoun oc'h euz, a lavarit-hu, da zisplijout d'eur mestr, d'eur mignoun, d'eun hostis, pe d'eun hostizez? met piou eo ho mestr kenta? ho prasa mestr? ho kuella mignoun? Piou en deuz ho krouet, ho prenet? piou a astenn d'oc'h ho puez? Piou en deuz bet beteg vrema ar vuia a garantez evidoc'h? Digant piou oc'h euz fizianz da reseo ar vuia a vadou, ma n'eo ket digant Doue eo?

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Ar Plac'h eürus Jeann a Valois

(1464-1505)

Ar plac'h eüruz-man, merc'h d'ar roue Frans Loiz XI, a c'hanaz er bloaz 1464. Savet mad gant eur vam zantel, Jeann a verkaz abred he c'harantez evit an Aotrou Doue, rak d'he femp bloaz e kare dija tremen kalz a amzer en iliz.

He zad, e leac'h rei skoazel d'he verc'h da veza devot, a falvezaz d'ezan he zrei da garet ar bed hag an ebatou, gourdrourz a reaz kastiza Jeann, m'e defe kendalc'het da vont aliez d'an iliz. Ar plac'hik keaz, o c'houzout ervad na c'helle ket ar rouanez, he mam, he difen kalz enep he zad, en em erbedaz ouz eur vam all karantez-soc'h ha galloudusoc'h: « Va mam, emezi, eun devez » d'ar Verc'hez gloriüs Vari, deskit d'in ar pez a dlean » d'ober evit plijout ar muia d'eo'e'h. » Lavaret a reer e respountaz an Itroun Varia d'ez: « Va merc'h, sec'h » da zaelou, eun devez da zont e c'helli kuitât ar bed, » ha neuze e savi eun Urz hag a gano noz-deiz meuleudi » da Zoue. »

Divar an devez-se, brasa plijadur ar verc'h devot a oue beva he-unan, rak he c'haloun a zistage mui oc'h mui euz ar braoigou hag ar plijadureziou a goll ar iaouankiz. O sonjal e oa lavaret kenavezo d'ar bed, pa resevaz urz digant he zad da zimezi d'an duk a Orleans. Ar zantez a oue rannet he c'haloun pa resevaz an urz-se, met plega a reaz da volonteiz he zad, hag an dimezi a oue great.

Jeann a Valois, eviti da veza eur brinsez leun a skiant, a furnez hag a vertuz, ne oa ket eur plac'h vrao; duk Orleans a reaz an neuz da zimezi ganti, en esper

beza roue Frans divezatoc'h, ha netra ken. Daoust ma oa digaloun en he c'henver, Jeann a oue atao leun a respet evitan; pa oue taolet duk Orleans er prizoun abalamour m'en doa bet c'hoant da lemel he gurunen digant ar roue, ar brinsez iaouank eo a c'houlenmaz pardoun evit he fried, hag a dorraz he chadennou. En despet d'he dousder ha d'he fasianted, Jeann ne resevaz ket, digant he fried, an disterra merk a garantez. Pa zavaz duk Orleans var tron Frans, goude maro Charles VIII, kenta tra a reaz a oue goulen ma vije torret an dimezi en doa great ganti, pe gentoc'h, goulen ma teufe ar Pab da ziskleria ne oant bet morse dimezet e guirionez an eil d'egile.

Ar Pab, goude beza great eun enklask piz, a ziskleriaz ne oa bet morse dimezet Loiz XII gant Jeann a Valois, setu ma c'hellaz ar brinsez mont d'al leac'h ma karje. Ne zavaz tam keuz ebet ganti euz ar gurunen gaer a golle, kurunen rouanez Frans; met he c'haloun a dride gant al levenez, o sonjal e defe peb eazamant d'en em rei da Zoue.

En em denna a reaz e Bourj; eno ec'h en em roaz d'ar binijen. Eur zae hag eur gouriz reun a c'holoe he c'horf tener, boaz da veza guisket gant dillad flour; ne zebre nemet boued gros ha dister.

Brud devosion dispar Jeann a Valois a redaz dre ar Frans a bez, hag heb dale, e teuaz eun toullad merc'hed da zeski ganti an doare da zervicha Doue a greiz kaloun. Sevel a reaz kouenchou evito, bez' e oue evit he C'hoarezed eur skouer hag eun nerz dre he buez parfet ha dre c'halloud he fedennou. Mervel a reaz d'ar 4 a viz c'houevrer 1505, pa rene he daou-ugent vloaz.

Pa icaz al leanezed da zebliha he c'horf, evel m'ema ar c'hiz, e oue kavet varnan eur c'houriz kalet ha poaniuz, kuzet dindan an dillad all; pemp tach are'hant a oa en arroud ar galoun, eur jaden houarn a oa en dro d'he c'hroazlez.

Korf Jeann a Valois, choumet fresk hag evel beo epad c'houec'h vloaz hag hanter-kant, a oue devet gant ar brotestanted. Unan euz ar re-man a roaz d'ez: eun taol lans, met pa jachaz he lans gantan, e oa leun c'hoad.

SONJOMP ERVAD :

Na peger guir eo ger Imitasion Jesus-Christ: « Ne 'z euz » den hag a c'helfe beva heb eur groaz benag ». An dud o deuz aliez avi ouz ar re a zo hueloc'h, desketoc'h, pinvidi-koc'h eget ar re all, ne zonzont ket e c'hell beza poan ha nec'h gant an henoriou, an deskadurez, an danvez. Piou a oa dleet d'ezan beza eürusoc'h eget Jeann a Valois, a zo bet epad pemp bloaz ha tregont merc'h an ti pe vestrez e palez roue Frans? Ha goulskoude n'e deuz bet nemed rann-galoun epad m'e deuz douget eur gurunen aour; kant guech eürusoc'h eo bet p'e deuz douget dillad dister eul leanez. Na aviomp ket ar re all, ha dougomp hor c'hroaz gant pasianted.

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Santez Juliana, Mezzeres

Ar zantez-man, ginidik a Nikomedi, e doa eun tad hag eur vam paian. Pa oue savet da blac'h iaouank, an oll a rea stad anezi, abalamour d'he gened ha d'he renk huel, met hi, e leac'h trei gant ar bed, a zelle ouz an traou krouet, hag a zonje e tleont beza renet ha renket gant eur mestr leun a furnez hag a c'halloud. Kerkent ha ma klevaz hano euz ar relijion gristen, e kredaz enni hag e c'houlennaz beza badezet: hiviziken he c'haloun ne oue troet nemet varzu eüruzdet ar baradoz.

Evilas, gouarner Nikomedi, a veza he goulennet da bried digant he zad, heman a lavaraz ia eviti. Prestik goude, Evilas, foug ennan, a deuaz da velet ar plac'h iaouank: Juliana hen digemeraz gant respet, hag a lavaraz d'ezan e oa kristenez, ha ne gemerje da bried nemet eur c'hristen: « Mar am e'harit, emezi, guelit » petra a c'houlennan diganeoc'h: na vezimp eüruz » nemet gant m'on dezo hon daou ar memez feiz, ar » memez relijion. »

Persekusion Dioklesian a rene neuze. Evilas a oue estlammet oll, hag a lavaraz: « Ne zonzit ket, a dra-zur, » en deuz an impalaer roet urz da verzeria ar griste- » nien; skrijuz e vezo beza kristen breman. Sonjit 'ta » pebez malloz a zo var ho penn! » — « Na e'houi ken » nebeut, emezi, n'eo ket brao ho toare, oc'h adori an » doueou faoz. Eun dismeganz, eur pec'hed eo d'eoc'h » heuil eur relijion ken dizakr. Me ho ped: troit kein » d'an drouk-spered mar am e'harit; na zaveteot hoc'h » ene nemed adori a rafac'h ar guir Doue, mestr an » env hag an douar! »

Evilas a respountaz: « Me a garfe heuil ar relijion » gristen evit plijout d'eoc'h, met gouzout a rit e tenn- » fen varnon malloz an impalaer, hag e kollfen va oll » vadou, va c'harg, va buez! » — « Oh! emezi, e'houi o » peuz aoun rak kasouni an Impalaer! Mad, klevit: » krena a ran ive da denna varnon malloz an Aotrou » Doue. Bugel oun d'ezan, ha netra na raio d'in trei » kein d'am Zalver benniget! »

Neuze karantez Evilas a droaz e kounnar. Tad Juliana hag hen a boaniaz da zistrei kaloun ar plac'h iaouank divar ar relijion gristen; klask a rejont he zouella dre gaer, met Juliana a joumaz start en he feiz; skourjezet ha chadennet e oue, met ne reaz van: renta a reaz bennoz d'an Aotrou Doue, pa oue, da c'houde, taolet er prizoun. Evilas a deuaz buan da lavaret d'ezi: « Ma na » zentit ket, e vezo red mad d'in, gouarner kear, ho » lakât d'ar maro abalamour ma 'z oc'h kristenez. » — « Na spountan ket rak ar maro, emezi, va brasa c'hoant » a zo kaout kurunen ar verzerien e baradoz Doue. »

Ar gouarner a roaz neuze urz d'he staga ouz eur peul, d'he skourjeza, ha d'he zevel a istribill divar bouez he bleo. Lakeat e oue an tan var he c'hostou evit ho devi, ha gant eun houarn ruz e oue toullet he daouarn d'ezi. Guelet a rejor e kreiz ar iudazerez-se, bizach ar verzerez e voenvi, met ne glevjot ganti nemet ar c'homzou-man: « O va Doue! deut d'am zikour, sikouret oc'h euz an tri » grouadur e fourn vraz Babylon, sikouret oc'h euz » Daniel etouez al leoned; ennoc'h ema va oll fizianz;

» n'am dilezit ket em foaniou, evit ma e'hellin renta
 » gloar d'eoec'h betek va maro! » Juliana a oa ouspenn
 hanter varo pa oue ehanet outi, ha taolet en toull ten-
 valla euz ar prizoun. Antronoz e teujor d'he e'herc'hat.
 Ar vourrevien a lavare: « Juliana a dle beza tremenet
 » pell zo. » Met souezet braz e ouent p'her gueljont
 leun a nerz hag a vuez, gant eur vizach ker flamm ha
 biskoaz. Ar gouarner Evilas a reaz he zeuler e kreiz an
 tan, met an tan ne reaz drouk ebet d'ezi: pemp kant
 paian o velet kement all, en em lakeaz da veuli Doue, ha
 da ziskleria e oant kristenien.

Juliana a oue e'hoaz taolet en eur gaoter eol bero,
 met heb kaout an distera poan. Da e'houde e oue
 dibennet, hag er memez amzer, ar pemp kant kristen
 nevez a oue lakeat d'ar maro e tro ar bloaz 299.

SONJOMP ERVAD :

I. — Den ebet, etouez ar baianed hag an dud fur hervez
 ar bed, n'en deuz diskouezet tost kement a furnez hag a nerz
 eget santez Juliana. Guelit anezi oajet a drivac'h vloaz,
 merc'h d'eun tad ha d'eur vam paian, eaz d'ezi ober eur for-
 tun gaer, o trei kein da oll vadou ar bed dre garantez evit
 he Zalver Jesus. Na brasa furnez en he c'homzou! na brasa
 ners-kaloun e kreiz ar poaniou skrijusa!

Goulen a reomp burzudou da gennerza hor feiz, met mer-
 zerenti ar verc'hez iaouank-se a zo burzuduz penn da benn,
 setu perak pemp kant paian a oue gounezet, en devez-se, da
 Zoue. Daoust ha ne zigorimp-ni ket eveldo hon daoulagad
 d'ar sklerijen, o velet eur verzerez o rei d'eomp eur skouer
 ker kaer?



AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Guevrok, Abad

Ar zant-man a zo ganet en Enez-Vreiz, hanvet abaoue
 Bro-Zaoz. He dad hag he vam a oa paour euz madou an
 douar, met rei a rejont d'ho mab ar guella euz an
 tenzoriou: eur geennadurez kristen. Pa deuaz da veza
 paotr iaouank, e kimiadaz diouz ar bed evit mont da
 vanac'h en abati sant Tugdual. Lakât a reaz kenteliou
 he vestr ha grason Doue da dalvezout, evit brasa mad
 he ene.

Pa dreuzaz sant Tugdual ar mor gant he vella diski-
 bien, Guevrok a oa unan anezo. Dont a rejont oll da
 zevel eur gouent e Landreger. Abarz eur pennad amzer
 sant Tugdual, o velet peger fur e oa Guevrok, ha pegen
 aketuz e oa d'he oll zeveriou, her e'hasaz gant daouzek
 manac'h all da zevel eur gouent nevez varzu Kerfeun-
 teun, hanvet breman Lanneur. E Kerfeunteun (Lan-
 meur), Guevrok hag he ziskibien a gavaz eun digemer
 laouen, met Guevrok, evit kaout muioc'h a beoc'h, en
 em dennaz ganto betek ar mor, hag a zavaz he gouent el
 leac'h m'ema breman Lokquirek. Piou a lavaro ar vad
 a rejont dre eno? Guelet e oue abred ar vro o chench
 doare, ha kristenien guirion o tiouan tro var dro,
 muioc'h-mui bemdez.

Eun dudi e oa klevet peger meulet e oa hano sant
 Guevrok, met ar zant a oa ken izel a galoun ma kemeraz
 aoun rak meuleudiou an dud. Lavaret a reaz kenavo
 d'he venec'h, hag e teuaz da veva he-unan en eul leac'h
 distro var zouar Plouzeniel, hanvet abaoue Traon-
 Guevrok.

Eno e savaz eur japelik gant skourrou guez, hag
 he-unan penn gant an Aotrou Doue e renaz eur vuez
 goall-galet. Beva a rea divar bara ha dour, he gousked a

gemere var an douar noaz, dougen a rea eur c'houriz reun, ha tremen a rea he amzer o sonjal en Aotrou Doue.

Pa oa sant Paol oc'h ober eur bale en he eskopti, e velaz eun dervez Guevrok, an ermit santel. Ober a reaz d'ezhan mont gantan evit he zikour da ren eskopti Leon. An den Doue, deut da veza breac'h deou an eskop santel, a gendale'haz da ren eur vuez a binijen.

Dioc'h ma lavar an historiou koz, eun deiz, da c'houel Maria hanter-cost, an dud, guisket en ho c'haera, a zirede d'an oferen bred. Sant Guevrok en eur dremen dre greiz kear a velaz eur gemenez iaouank o c'hriat e tal he dor: « Penaoz? eme ar zant, hag e labourit da » c'houel an Itroun'Varia? Paouezit en han' Doue! »

Met hi a respontaz dichek e plije ganti gounit he devez d'an deizioù goul evel d'an deizioù labour. Ker-kent ha ma roaz he respont, e oue seizet oll he izili. Ar plac'h keaz ne zaleaz ket pell da anaout e oa kastizet gant Doue, abalamour d'he dizentigez. Distrei a reaz ouz Doue a vir galoun, anzao a reaz he fec'hed, iun a reaz epad eiz dez, hag e pedaz ar zant da zont beteg enni. An den Doue a 'z eaz, hag a bareaz raktal anezi gant sin ar groaz. Hag e leac'h ma oa ti ar gemenez, sant Guevrok a reaz sevel eur japel hanvet chapel Kreisker.

Vardro ar bloavez 1400, chapel Kreisker savet gant sant Guevrok o veza eat da fall, a oue pilet. Neuze e oue savet en he flas, gant micherourien hor bro, an iliz hag an tour huel a veler breman e Kastel-Paol; tour dispar er bed oll.

Goude beza sikouret, hervez he c'halloud, sant Paol da ren an eskopti, Guevrok a varvaz e Landerne, vardro ar bloaz 547. Menec'h Loquirek a gasaz gantho relegou ho abad santel.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar zent o deuz e peb amzer karet al leac'hiou distro: eno pell diouz kenteliou an dud dizakr, pell diouz ebatou, ha skoueriou fall an dud lik, pell diouz trouz ar bed, e komize an Aotrou Doue d'ho c'haloun. Arabat eo sonjal eo eur seurt buez eur vuez didalvez: an ermited guechall, koulz

hag ar venec'h, hag al leanezed e peb amzer, a zo eur binvidigez evit ho bro. Dre ho finijennou, ho foaniou, ho fedennou, an dud santel-ze a rent gloar da Zoue, a zigoll anezan euz an dismegans a ra d'ezan an dud fallakr, hag a gemer varno dle ar bec'herien evit paea evitho da Zoue, ha gounit d'ezo grasou a zilvidigez. An dud santel-ze eo a vir ouz kurunou Doue da buluc'ha ar bed abalamour d'he fallagriez.

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Simeon, Eskop

Sant Simeon a oa mab da Gleophas, lezhanvet Alphee ha niz da zant Joseph. He vam a oa Mari: bez' e doa bet an heur-vad da ober koumpagnunez d'ar Ver'hez Vari betek var ar C'halvar: kar tost e oant an eil d'eben. Simeon a oa eta euz a gerentiach Jesus-Christ, disken a rea evel dan euz a lignez ar roue David. Dont a reaz er bed eiz pe nao bloaz araok ginivelez Hor Zalver. Mar doa Simeon tost d'Hor Zalver dre ar goad, e oue tostoc'h d'ezhan c'hoaz dre ar garantez, bez' e oue atao unan euz guella diskibien Jesus-Christ, mad da zelaou he genteliou.

Test eo bet euz an darn vuia euz miraklou Hor Zalver, test euz he resurreksion; her guelet en deuz o pignat en env. Deiz ar Pantekost, edo ive asambles gant ar Ver'hez, an ebestel, hag an diskibien all er Senakl; ar Spered-Santel a ziskennaz var an oll dindan furn teodou tan.

Deut ar mare d'an ebestel ha d'an diskibien da vont daou ha daou da brezeg ar feiz dre ar bed oll, Simeon a joumaz gant an abostol sant Jakez e Jerusalem. Heman a oue kenta eskop ar gear-ze. Simeon a roaz an dorn d'ezan evit kelen ar Iuzevien a oa enni, hag o doa barnet Hor Zalver d'ar maro.

Nao bloaz var 'n ugent goude, (62), ar Iuzevien aheur-

tet a verzeriaz sant Jakez. Simeon a oue kavet ar guella da zalc'her he blas. Sakret eskop, e teuaz da gemeret muioc'h c'hoaz a zoursi hag a evez euz a bep tra. Ne chane da brezeg; mad dreist ha pasiant e oa da ziskleria d'ar bobl guirioneziou ar feiz, er c'hiz m'en doa ho desket he-unan gant Hor Zalver.

An impalaer Trajan, o veza roet urz da voall gas ar gristenien, an eskop santel a oue kroget ennan, ha tamallet da brezeg heb ehan aviel Jesus-Christ: Simeon a oa neuze c'houec'h-ugent vloaz. Kaset dirag Attikus, gouarnar ar Syrii, heman a c'houe hemennaz d'ezan adori doueou ar rouantelez ha senti ouz an impalaer.

Ar zant a ziskouezaz n'ez euz ha n'e c'hell beza nemet eun Doue, hag a roaz testeniou ker sklear euz ar virionez-se, ma oue mantret Attikus ouz he glevet. Evelato ar gouarnar na droaz ket kein d'an idolou, abalamour d'an ioulou fall a oa en he galon, hag a reaz skourjeza ar zant heb truez ebet. An oll a oa souezet o velet nerz-kaloun eun den ker koz, dindan an taoliou kris ha di-druet a goueze varman. Meur a baian a anavezaz ar guir feiz o velet pegement a nerz o deuz digant Doue ar re a zervich anezan euz a greiz ho c'haloun.

Attikus a varmaz ar zant da vervel var eur groaz, setu m'en devoue Simeon an hënor da achui he vuez evel he vestr. Mervel a reaz en eur drugarekât Jesus-Christ euz ar c'hras da vont euz ar bed-man divar ar groaz. Merzeriet e oue d'an 18 a viz c'houevrer 107 goude donedigez Hor Zalver.

Guelet a reer darn euz a relegou sant Simeon e Bologn hag e Bruxelles.

SONJOMP ERVAD :

I. — Mab Doue a zesk d'eomp petra eo ar garantez a dleomp da gaout evit hor c'herent hag hor mignoned, dre ar garantez en deuz bet he-unan evit sant Simeon a oa kar d'ezan hervez ar goad. Her c'haret en deuz betek ober eur zant anezan. Red eo d'eomp karet an oll, muioc'h a leac'h on deuz goulskoude da garet an dud a so tostoc'h kar d'eomp.

Ar garantez guirion a ra goulen evit ar re a garomp er bed-man madou paduz an eternite, da lavaret eo: gras Doue, ha silvidigez an ene. Setu aze petra a dleomp da glask da genta, ha dreist peb tra, d'hor c'herent, d'hor mignoned; peb karantez all, heb hounnez, a zo eur garantez pell diouz Doue; eur garantez fall, hag a ra heugi eur galon gristen.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

An den eürus Konrad (1290-1351)

Konrad a oa eun dijentil pinvidik euz a gear Plaisans. Ne rea morse neb labour ebet: he oll amzer a dremene o chaseal. Eun devez m'edo gant he vevellien oc'h ober eun dro chase, e kavaz eul loan gouez, hag hen ha mont var he lere'h. Al loan gouez en em guzaz en eur voden vraz a zrez hag a spern. Evit ober d'ezan tee'het. Konrad a lavaraz lakât an tan en drez: sentet e oue outan. An avel a deuaz da c'houeza spountuz, a lammaz euz ar c'hoat var an drevajou, a redaz euz an eil tachen d'eben, hag a rivinaz eur c'halz tud var ar meaz.

Konrad, o velet an drouk, en em dennaz prim ha sioul da gear Plaisans, heb ober van euz a netra. Pa veljont an tan goall, an dud a glaskaz gouzout piou en doa he lakeat da gregi, piou a oa bet penn-abeg d'an drouk. Guelet a rejont var dro eno eur paour keaz, diskredi a rejont varman; tamallet e oue, prizouniet, ha barnet d'ar groug.

Konrad, pa velaz edo an den-ze varnez beza krouget, a zavaz enkrez ennan dre c'hras Doue, hag a lavaraz: « Ar c'heaz-se n'eo ket kablu: n'eo ket leal e teufe da » veza goasket evidon-me, pa 'z eo guir me eo em euz » great an taol. Nan! Nan! red eo d'in anzaou va faot ha » restaol ar c'holl. » Var ar zonz-se, ez eaz var eün da

» lavaret: « An den-ze a zo didamall; me va-unan a zo » ar penn-kaoz euz an oll drouk, me a fell d'in rapari ar » gaou am euz great. »

Konrad a zevenaz he c'her. Evit rapari ar gaou en doa great, e verzaz he oll zanvez, fount ha guir, hag e restaolaz ho digoll d'an oll dud, met rivinet e oue he-unan.

He bried a ieaz en eur gouent leanezed, hag hen a dec'haz euz ar vro da vont e Trede Urz Sant-Fransez.

O na kaerra distro! evit guir, eun taol e oa euz a c'hras Doue, a zo atao prest da ober kement all, ma kavje kalonou e stad vad.

Konrad, goude beza bet e Roum, o pardouna er plasou santel, en em dennaz er Sisil. En enezen-ze e tremenaz daou-ugent vloaz o pedi Doue hag oc'h ober pinijen. Kousket a rea var an douar noaz; eur mean a lakea da harpa he benn. Beva a rea divar griziuou louzou divlaz ha c'houero, rag ne zebre anezo, nemet pa zave c'hoez an trenk ganto.

He spered a veze dreist pep tra o sonjal dalc'h-mad e Jesus-Christ stag ouz ar groaz. Bep guener ez ea da gear Noto da zellet ouz eur grusifi, ha da bedi dirazi: di eo ez eaz adarre p'en em velaz goall glanv. Eno, daou-linet en iliz, a greiz ma pede he zivrec'h e kroaz, hag eur sklerijen gaer en dro d'he benn, e rentaz he ene d'he Grouer, er bloaz 1351. O veza ma choume he gorf, maro, var he zaoulin, he dad kovesour a oa eno var al leac'h, ne anavezaz ket pe heur e oa tremenet; kleier diou iliz Noto hag Avola, o veza eat e brall anezo ho-unan, a verkaz d'an oll e oa maro an den santel.

An den eüruz Konrad a vez pedet evit an disken vouzellou, abalamour en he vuez ha goude he varo en deuz pareet kalz tud diouz ar c'hlenved-se.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar glac'har en deuz bet Konrad d'he faot, hag an displijadur da velet eun den keaz tamallet en he leac'h, a voustraz kement he galoun ma teuaz, hen he-unan, d'hen anzaou, heb beza bet diskuillet gant den. Petra zo souezusa?

he binijen, pe he garantez? Evesait dreist pep tra ouz gras Doue, a deu dre an drouk-se d'hen lakât da jench buez.

Pa viot, evel ar zant-ma, lakeat oc'h-unan, gant gras Doue, var ho tu hag e tro da zistrei, ne zaleit ket d'en em rei oll d'an devoision.

II. — An den santel-man en deuz bevet daou-ugent vloaz divar griziuou louzou divlaz ha c'houero. Pegen nebeut e kastizomp-ni hor c'horf e skoaz ar zent? Ped den a zo, siouaz, ha ne glaskont nemet leunia ho c'hof en dibri ha dreist pep tra en eva? Seulvui ma roer d'ar c'horf, seulvui e c'houlén. Evit trec'hi ar voazamant milliget-se, e tleomp sonjal alies: va c'horf ne deo nemet ludu, breinadurez, hag a vezo rentet e poultr hag e ludu pa sonjin nebeuta. Mar domp aketuz da zonzal a zevri er virionez-man, e teuimp, a dra zur, gant gras Doue, da drec'hi hor goall voazamanchou.

AN UGENVED DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER

Sant Euchez, Eskop

Ar zant-man a zo ganet e kear Orleans, er bloaz 687. He vam, eur c'hreg devot ha vertuzuz, her c'helemmaz ervad ez-vianik, hag e devoue heb dale, ar joa d'her guelet aketuz da zaoulina ha da bedi Doue. Ar brasa plijadur a hellet ober d'ezan neuze, a oa he gas d'an iliz. Ar respet, ar vodesti, ar furnez a ziskoueze el leac'h santel-ze d'an oad a c'houec'h pe zeiz vloaz, a zoueze an oll.

O lenn komzou an Abostol sant Paol, a lavar e tremen ar bed evel eur skeud, e oue ker skoet gant gras Doue, ma troaz kein d'he vadou ha d'he blijadureziou, evit mont da vanac'h. Goulen a reaz digor en abati Jumiej, en eskopti Rouen, er bloaz 714. Eno e renaz eur vuez a binijen hag a beden, betek ma teuaz da veza eur mellezour hag eur skouer evit ar re zantela euz he Genvreudeur.

Goude maro he eontr Suavarik, eskop Orleans, an dud a iliz hag ar bobl her choazaz evit ho eskop. Evel ma anaient he humilite vraz, hag ouspen, m'o doa nec'h na deuje da lavaret nan, e pedjont Charles-Martel, a oa neuze o ren ar Frans, da boueza var Eucher evit kaout he asant. Ar prins-se a roaz d'ezo unan euz he ofiserien huella da vont ganto, gant urz euz he berz da gemeret ar zant en he gouent, ha d'hen digas da Orleans.

Evel ne oa eat da vanac'h nemet evit tec'het diouz ar bed, ha diouz an henoriou, Eucher, pa glevaz ar c'helou, a oue ker strafuillet ha pa vije c'hoarvezet gantan eur guall darvoud benag. O lavaret ar c'hena-vezo divezad d'he Genvreudeur, e skuillaz kalz a zaelou gant ar c'heuz en doa da gimiada diouto. An dra-ma a zigouezaz er bloaz 717.

Eucher, goude beza bet skouer ar venec'h, a deuaz da veza eun eskop euz ar re zantela. Lakât a reaz eun urz euz ar re gaera en he eskopti, ken etouez an dud a iliz, ken etouez ar bobl.

Digeri a rea he zaoulagad var beb tra da herzel ouz an drouk, da zikour ar re vad, ha da ziskar labour Satan. An drouk-spered, dioc'h he du, gant sikour he reve-lien, a boaniaz da freuza an oll vad a rea Eucher, gant sikour an Aotrou Doue, en he eskopti.

Tud digoustians a ieaz da lavaret da Charles-Martel en doa ar zant droug komzet en he enep, dre m'en doa miret outan da laerez madou an Iliz. Charles-Martel, en doa bet betek neuze respet evit ar zant, troet gant komzou flour ar re fall, hen harluaz e kear Kologn er bloaz 733. Eucher, o veza ma klaske beza dianavezet ha disprijet, a oue joa gantan mont d'an harlu. Hogen ne c'hellaz ket kuzat he vertuziou ouz tud Kologn, rag eno, koulz hag en Orleans, e oue karet hag henoret gant an oll. Ar vrud euz a gement-se a deuaz beteg Charles-Martel, setu mac'h aotrez ar zant da rei an dilez euz he eskopti, ha d'en em denna en abati Sant-Troud. Eno e tremenez ar c'houec'h vloaz diveza euz he vuez, o veva evel eun eal. Doue a deuaz da gere'hat he zervicher: mervel a reaz santelamant, er bloaz 738, d'an 20 a viz c'houevrer.

SONJOMP ERVAD :

I. — Fougeou ar bed, da lavaret eo, ar bed gant he vadou, he henoriou, hag he blijadureziou a dremen buan. Ar c'homzou-ze a reaz da zant Eucher dilezel ar bed evit ren eur vuez devot ha santel. Peger kaer eo ar c'homzou-ze! Ped sonj vad ne zavint ket divarno!

Fougeou ar bed ne dint nemet moged, eur skeud hag a dremen evel eul luc'heden. Fougeou ar bed a zo steuen an techou fall hag ar poaniou. Fougeou ar bed-man a dremen: perak eta staga outo, dalla ho kaloun ganto? Fougeou ar bed a zo tremenet evit kalz tud euz hon anaoudegez, tremen a raint, kerkoulz all, evidomp hon-unan. Kuitaomp-hi a galoun, abarz ma teui ar maro d'ho diframa diganeomp.

II. — Sant Eucher, ken divlam dirak Doue, a zo bet tamallet e gaou hag harluet, da lavaret eo, kaset pell dioc'h he vro. En harlu en deuz kavet diskuiz d'he ene, henor ha meuleudi: great en deuz vad d'eur rum all a dud.

Kaer o deuz tud ar bed goallgas ar zent, ne reont nemet rei henor d'ezo, ha kreski ho mirit. An nep a anavez mad, hag a heuil mad he relijion, na deu ket da fallgaloni, na d'en em rei d'an dristidigez, abalamour d'ar boan ha d'an ankeniou a gouez varnan. Barnomp ha poezomp an drouk hag ar poaniou a zigouez ganeomp er bed-man, evel m'her graimp en heur ar maro, hag e vevimp eüruz.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Sant Dosithee, Manac'h

Ar zant-man a oa mab eun ofiser a renk huel. Iaouank e oa c'hoaz pa glevaz displega dirazan ar vuez santel a rene ar venec'h er c'houenchou. Dosithee heb choum da zale tam, a ieaz da c'houlouen beza digemeret er gouent tosta a oa er vro.

An tad Abad, o velet e oa leun a volonteaz vad, a roaz d'ezan dor zigor; met abalamour ne oa ket krenv, e reaz

d'ezan kempen kampr ar relijiuzed klanv, ha lakât evez na vankfe netra d'ezo.

An tad Abad hen henchaz he-unan var hent ar zantelezh: kentelia a reaz Dositee da zonzal ema Doue e peb leac'h, da reiza ioulou he galoun, da derri bemdez he voazamanchou direol, da zenti gant joa hep c'hoantât netra all ebet nemet bolontez he zuperior. He voaza a reaz ouspenn da viret he galoun distag diouz traou ar bed, da garet an humilite hag an dismegansou, da ober he labour pemdiziek ha pep tra gant ar brasa c'hoant da blijout da Zoue. Dositee a heuliaz an oll genteliou-ze gant ar brasa aket, setu ma teuz da veza e berr-amzer eur relijiuz direbech ha santel braz, daoust d'ezan da gaout eur garg izel: eun dudi e oa he velet ker sentuz, ken humbl, ker seder, o servicha he Vreudeur er gouent. C'hoant en doa d'ober an traou disterra gant he oll galoun: aoun en deze atao da fazia.

O veza, eun deiz, lavaret eur gomz dichek ha rust da unan euz he Vreudeur, e redaz d'he gambr, ha stouet eno d'an douar, ne ehane da vouela ha da hirvoudi. An tad Abad o veza he gavet en he c'hlae'har, a c'houlennaz digantan petra a oa c'hoarvezet: « Va zad, eme » Dositee, falloc'h falla e ran bemdez, displijet em euz » da Zoue en eur goall-gomz ouz unan euz va Breudeur. » — « Pardounet oc'h gant Doue, eme an tad Abad; savit » ha distroit e peoc'h d'ho labour. » Dositee a zentaz, hag a ieaz, ker seder ha tra, da ober he labour gant muioc'h a evez hag a zevosion eget biskoaz.

Tremen a reaz evelse pemp bloaz er gouent: o sonjal e Doue bepred, sentuz hag izel a galoun. Koueza a reaz, eun devez, klanv he-unan, o servicha ar re glanv.

E kreiz he voasa anken, e veze klevet o lavaret: « Va » Doue ha va Zalver, o pezet truez ouzin! Va Jesus dous » ha karantezuz, va zikourit! Guere'hez santel, va mam » muia karet, bezit bepred ganen. » An tad Abad a c'houlennaz digantan hag ober a rea atao ar beden a galoun. Dositee a respountaz: « Va zad, n'em euz, » siouaz! galloud all ebet mui, nemet sevel va c'haloun » varzu an Aotrou Doue! »

O santout he nerz o vont dioutan, e reaz ar goulenn-man, a ziskouez pegement e oa troet da zenti: « Va zad, » roit d'in konje da guitât ar bed-man. » Ar zuperior, tenereat oll he galoun, ha daelou en he zaoulagad, a lavaraz: « Va mab, it e peoc'h, it gant fizianz dirag au » Aotrou Doue, ho tigemeret a raio laouen e gloar ar » baradoz. O pezet sonj d'he bedi evidomp. » Ha ker-kent ha ma klevaz ar c'homzou-ze, Dositee a dremenaz, evel pa ne vije falvezet gantan mervel, nemet en eur zenti ouz urz he zuperior (530).

SONJOMP ERVAD :

Fazia a ra an den a gred eo red evit beza sant ober traou braz ha diez, pe beva e kreiz ar pinijennou kaleta. Dositee, deut da veza sant, a ziskouez d'eomp ne c'houlenn ket Doue an traou-ze digant an oll, hag e c'hell an den tizout betek ar zantelezh heb ober kement-se.

Ar manac'h devot-man, nebeut a iec'hed d'ezan, ne rea nemet soursial ouz ar relijiuzed klanv. He zuperior e doa soupleat evitan pinijennou he Urz, hag e teuz evelse da veza eur zant braz, dre he galoun izel, he zentidigez direbech, hag he garantez guirion evit Doue. Petra vir ouzomp-ni 'ta da veza sent, ha sent braz zoken, e pe stad benag e c'helfemp beza?

AN EIL DEVEZ VAR AN UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Kador Sant Per en Antioch

Mab Doue a ziskennaz var an douar evit beza Salver ar bed. Da zeiz ar Pantekost e oue savet an Iliz, hag ar Spered-Santel a reaz euz an ebestel tud nevez, karget euz a c'hrasou hag euz a c'halloud Doue, prest da skuill ho goad evit skigna an Aviel dre ar bed oll. Sant Per, lakeat da vestr var an ebestel, en doa neuze ar garg da vleina an Iliz ha d'he asten muioc'h mui; en em lakât

a reaz raktal da brezeg e Jerusalem, ha da ober burzudou; tud a vilherou a c'hounezaz da Jesus-Christ.

Met red e oa d'an ebestel mont varzu an oll boblou: sant Per, o veza kimmiadet diouz Jerusalem, a deuz da Antioch.

Antioch a oa hanvet neuze ar « gear vraz », hag e guirionez, d'ar mare-ze, ne oa brasoc'h egeti nemet Roum, hag Alexandri. Brao e oa gullet enni ar manerion kaer, an ilizou paian, ar skoliou, ar staliou: brudet e oa tro-var-dro evit he finvidigez hag he deskadurez.

Antioch a oue eta kear benn an Iliz, goude Jerusalem.

Providans Doue eo a renke an traou en doare-ze, evit brasa mad ar relijion gristen: euz a Antioch e oa eaz da zant Per kas he ziskibien e rouanteleziou ar Zao Heol. An ebestel all, o labourat peb hini anezho var an dachea a oa diguezet gantan, a zikoure prins an ebestel da sklerijenna ar broiou-ze.

Goude beza choumet eun nebeud bloaveziou en Antioch, sant Per a azezaz he Gador a Bap e Roum, kear benn ar bed d'ar mare-ze. Ac'hano en doa tro da gas sklerijen ar feiz, n'eo ket d'eun nebeud broiou e oa, met dre ar bed oll, koulz lavaret.

En Antioch, sant Per a c'hounezaz eleiz a dud d'ar relijion gristen, eno eo e oue roet da genta an hano a gristenien da ziskibien Jesus-Christ; met an hano-ze a reaz eun tro ar bed, rak e pep leac'h, dizale, betek er broiou pelia, e oue bugale da Zoue ha d'an Iliz. Euz Antioch, sant Per a rene ar gristenien tro var dro, hag an Iliz a-bez; kas a reaz varzu ar pevar avel ebestel da asten muioc'h mui rouantelez an Aotrou Doue var an douar, ha mont a reaz he-unan da gas sklerijen ar feiz en Asi-Izela, er Pount, er C'happados, er Galasi, er Bithyni.

« E guirionez, eme sant Ian Chrysostom, kear Antioch » e deuz bet eun honor kaer digant an Aotrou Doue, » abalamour ma z' eo bet an Abostol sant Per, kenta » vikel Jesus-Christ, o choum enni, hag o ren ac'hano » an Iliz. »

An devez ma 'z eaz sant Per da jom da Antioch a zo eun deiz da veza dalc'het sonj anezan epad hir

amzer, rak an Iliz a rea guehall eur gouel bras da genver an deiz-se. E Roum, dreist oll, e oa kaer gullet pegement a dud a lide ar gouel-ze, an Tad Santel ar Pap he-unan a rea aliez eur brezegen d'ar bobl en devez-se.

SONJOMP ERVAD :

I. — Hor Zalver Jesus en doa lavaret: « Rouantelez an » envou a zo henvel euz ar c'hreunen zezo, bian da genta, » hag a zeu goude da veza eur vezen vraz », hag e guirionez, er penn kenta, al lezen gristen a oa heuillet gant nebeud a dud: eur gelennadurez embannet gant Hor Zalver en eur c'hornik douar, dirak Juzevien ha ne reant ket peurvuia eun digemer kaer d'he genteliou. A nebeudou al lezen gristen en em skignaz dre ar bed: euz Jerusalem e c'hounezaz Antioch, da c'houde Roum hag ar bed oll. Dirak merkou ken anat euz oll c'halloud ha furnez an Aotrou Doue, piou en defe c'hoaz difizianz euz komzou Jesus? Evidomp-ni, greomp bepred digemer vad d'ezo en hor c'haloun.

II. — Sant Per a zo e plas Hor Zalver o c'houarn an Iliz, Jesus a zo atao ganti, Hen eo he gouarn, he difen, hag a zalc'h anezi en he zav. Ar penn eo enni, petra benag n'her gueler ket, hag he zikour a ra dre ar Spered-Santel. Ar Spered a virionez a vir outi da fazia, hag a ra d'ezi anaout kement a zo mad da henchha ar gristenien d'ar baradoz.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Sant Per Damian, Docktor

Ar zant-man a oa ginidik a Ravenn. He dud koz a oa bet pinvidik, met he dad hag he vam a oa paour dreist. Pa deuz er bed, he vreur kosa a lavaraz: « Pebez gual » heur gullet kement a heritourien el leac'h n'en dezo » den an distera heritaj. » O klevet ar c'homzou-ze, he vam a lavaraz: « Ne vagin ket ar c'hrouadur-man. » Eur c'hreg estren, o veza deut en ti, a respountaz neuze: « Mantruz eo gullet eur vam gristen oc'h ober evel ma

» rit. Al loened ar re grisa a vag ho re vian, hag an
» ealiek-man a zo taolet a gostez! Piou a c'hoar ha ne
» zeuio ket hen da veza henor he famill hag he vro? »
Hag o veza kroget er bugelik, e kemeraz soursi d'he
gempen ha d'he viska; ar vam, glazet he c'haloun gant
rebechou he c'houstians, a zavaz he bugel.

Pemp bloaz goude, Per a gollaz he dad hag he vam,
hag a oue lakeat e karg he vreur kosa, eun den dinatur.
Penaoz lavaret ar poaniou kriz, ar goal-vuez a rankaz
da c'houzanv euz he berz? Kaset e veze da ziuall
anevaled louz gant eun tam kreun seac'h, he lezel a reat
diarc'hen, n'e oa paour ebet guisket ker fall hag hen;
goall bedennou a gleve var he beñn, goall daoliou a bake,
met ar bugel a joume bepred leun a zousder hag a
basianted.

Hogen eur breur all d'ezan hanvet da bersoun e
Ravenn, a gemeraz truez ouz Per, hag en em gargaz
anezan; her c'has a reas d'ar skol e Ravenn, da
Faenza, da Barm. Per Damian a zeuz e berr-amzer da
veza desket braz var al lezennou, hag helavar meurbet
da brezeg; brud en devoue da veza eun den dispar.
Kinnig a reat d'ezan henoriou: « Perak, emezan, en em
» staga ouz madou ar bed-man? Ho c'huitât a rankin
» eun deiz, petra a vir ouzin da drei kein d'ezo hirio
» evit beza oll da Zoue? » Laosker a reaz eta he damik
peadra d'he vreur kosa, evit mont e kouent Font-
Avellan.

Ar relijiuzed-man a heulie eur reolen a vuez euz ar
re rusta, kerzet a reant bepred diarc'hen, aliez e iument
divar bara ha dour, nebeut e kouskent, ha tremen a
reant pell amzer o pedi a galoun. Per a heuliaz ar strisa
ma c'helle ar piniennou-ze, hag a roe he oll amzer da
zezki ar Skritur zakr. An tad Abad her c'hargaz da
brezeg: hen ober a reaz gant kement a nerz, ma c'houne-
zaz eleiz a eneou da Zoue. Abarz nemeur, Per Damian a
oue hanvet da dad Abad, hag a skrivaz levriou kaer evit
maga an deskadurez hag an devosion etouez ar griste-
nien.

Pa glevaz hano euz he zantelez hag euz he zeskadurez,
ar Pab a ginnigaz d'ezan kargou, henoriou, beza eskop,

met Per a lavaraz nan. Ar Pab hag an dud brudeta
euz ar vro a veze aliez o c'houlenn aliou digantan var an
traou diesa. Erfin ar Pab Stephan IX her greaz, en
despet d'ezan, eskop Ostii ha kardinal.

Biskoaz eskop n'en devoue mui a aked egetan da
labourat evit silvidigez he bobl. Mad e oa ouz ar beorien,
hag ar re glanv; iun a rea bemdez divar bara ha dour;
kousket a rea var ar planch, ha piniennou all a rea
e'hoaz. Dougen a reaz ar bobl da iun bep guener, ha da
lavaret bep sadorn ofis bian ar Verc'hez Vari. Kement
e reaz dre he brezegennou, he zantelez hag he vertuziou
ma lakeaz he eskopti da veza kalz guelloc'h.

Goude beza renet he eskopti epad meur a vloaz, ha
great kefridiou bras evit an Tad Santel ar Pab. Per a
c'hellaz rei an dilez euz he garg. Gant pebez levenez
e tistroaz d'he gouent! Plega a reaz adarre d'ar reolen,
penn da benn, evel an diveza euz ar venec'h.

Renta a reaz erfin he ene leun a veritou d'he Zoue, er
bloaz 1072, d'an oad a dri bloaz ha pevar ugent. Ar pab
Leon XII en deuz savet anezhan e renk Doktored an
Iliz.

SONJOMP ERVAD :

Nag a dud a zonzj: « Na me a vije bet devot, ma ven bet
en eun tiegez all, n'eo ket en hen-man eo! Peger santel e
vijen bet, ma vefen bet eat d'ar gouent! » Ar zonzjou-ze a zo
lakeat en ho penn gant an diaoul. Doue a fell d'ezhan e teu-
fac'h da veza santel er stad a vuez m'emaoc'h enghan, hag
a roio d'eoc'h, evit kement-se, an oll grasou m'o peuz ezom
anezho. Sant Per Damian a zo bet skolaer, manac'h, eskop
ha kardinal; e peb stad a vuez en deuz poaniet da zervicha
Doue guella ma c'helle: eur zant braz eo er baradoz. Na jou-
mit ket da huvreal: « Me garfe beza en eul leac'h all », po-
gnit da veva e guir gristen, aze, e leac'h m'emaoc'h breman.



AR PEVARE VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Sant Mathias, Abostol



Sant Mathias a zo unan euz a vella diskibien hor Zalver, hen heuil a reaz, epad an oll amzer ma prezegaz var an douar. Sant Mathias n'eo ket unan euz an daouzek a zo bet choazet gant Hor Zalver he-unan, hanvet eo bet gant an ebestel all hag an diskibien genta evit kemeret plas an traitour Judas: setu ama penaoz eo diskleriet kement-se er Skritur zakr.

An ebestel hag an diskibien en em vodaz er Senakl, da c'hortoz er beden ma tiskenje ar Spered-Santel varnezo, hervez an urz en doa roet d'ezo Hor Zalver Jesus-Christ pa bignaz en env. Sant Per, vikel Jesus-Christ, penn an Iliz var an douar, a zavaz en he zav e kreiz an oll. « Va breudeur, emezan, setu deut ar mare » da choaz eun abostol all e leac'h an traitour Judas » Iscariot, a zo bet fallakr aoualc'h da verza he vestr, » hag hor Mestr. Her gouzout a rit; abostol e oa koulz » ha ni hon-unan; galvet eo bet eveldomp gant Jesus- » Christ da brezeg he Aviel, maro eo en eur stad » skrijuz: en em grouget eo. Red eo breman dibaba en » he leac'h unan benag guest, ha din euz eur garg ken » huel; eun den hag a c'hello renta testeni, diskleria eo » savet Jesus-Christ euz a varo da veo. Red eo eta choaz » unan hag en deuz hen heuillet en amzer m'edo var an » douar, en deuz klevet he brezegennou, ha gaelet he » viraklou. »

Goude beza goulenmet sklerijen ar Spered-Santel, e kemerjont daou zen, anavezet evit ho vertuziou kaer: Joseph Barsabas, leshanvet ar Just, ha Mathias. O veza neuze en em roet assamblez da bedi a greiz kalon, e leverjont: « Salver benniget, c'houi a anavez kalonou an » oll, plijet ganeoc'h ober d'eomp anaout pe hini euz an » daou zen-man oc'h euz choazet, hag a dleomp da geme- » ret. » Neuze e rejont d'ezo ho daou tenna d'ar blouzen verr; Doue a reaz d'ezi koueza gant Mathias, hen a oue resevet evit an daouzekved abostol.

Pa zeuaz an ebestel da ranna etrezo ar bed evit mont da gas e pep leac'h sklerijen an Aviel, sant Mathias en devoe ar Judee evit he lod. Ar c'hoant braz en doa da zavetei ar Iuzevien, he genvroiz, a reaz d'ezan kemeret kalz a skuisher, en em lakât alies var var da goll he vuez, met ive bez' en devoe al levezne da c'hounit kalz a eneo da Zoue.

Prezeg a rea ar binijen dre he vuez he-unan, koulz ha dre he gomzou; poueza a rea, dreist oll, var an dever on deuz d'ober brezel d'ar c'horf, da enebi ouz an techou fall ha direiz, da zuja ar c'hig d'ar spered en eur ober pinijen.

Ar beleg braz Ananias, o velet e teue kalz a Tuzevien da heuil ar relijion gristen dre ners he brezegemou, a reaz kregi en abostol, hag her barnaz da veza labezet, da lavaret eo, lazet a daoliou mein. Ar zant a ziskoueze sklear d'he genvroiz e oa Jesus a Nazareth ar Messias diskleriet gant ar bropheted, hag Ananias a lavare: « Re a dud a dro gantan. »

Ar zant o tigouezout var dachen ar zakrifis, en em lakeaz var he zaoulin, da drugarekât hor Zalver euz ar c'hras a roe d'ezan da vervel evit difen he relijion. En eur bedi erfin evit an oll Jusevien a oa var al leac'h, e oue flastret a daouliou mein, hag evel ne oa ket c'hoaz peurvaro, e oue dibennet gant eun taol bouc'hal. He verzerenti a c'hoarvezaz e Jerusalem varlerc'h ar bloaz tri-ugent goude donedigez Hor Zalver; en amzer an impalaer Neron.

SONJOMP ERVAD :

Judas, goude beza bet galvet Jesus-Christ da veza abostol, goude beza resevet grasou braz, ha beza bet kelennet gant Hor Zalver he-unan, a zeuaz da ober eun implij fall euz ar grasou kaer-ze, da verza he Vestr, da goueza en dizesper, ha d'en em zaoni. Piou a c'hell goudeze beva heb aon na spont? E pe stad benag e vefac'h, peger santel benag e c'helfac'h beza, bezit atao en aon d'en em goll. Na vezo kurunet nemet an hini en devezo kendale'het betek ar fin.

Sant Mathias en deuz great implij vad euz ar grasou en deuz resevet, labouret en deuz da vont bemdez var araok e karantez Doue; skignet en deuz gloar Doue betek fin he vuez, ha merit evelse kurunen ar zerzernti.

Bezit mad da ober implij euz ar grasou roet d'eoc'h, hag e veritot reseo grasou all brasoc'h ha krenvoc'h.



AR PEMPED VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Sant Tares, Eskop

Ar zant-man a zo ganet e Konstantinopl. He vam, stard en he feiz, a voazaz ez-vianik he mab da lavaret he bedennou ha da heuil mad he relijion. Kemeret a reaz evelse pleg an oll vertuziou kaer a oue remerket ennan divezatoc'h. Epad ma teske gant he vam ober he zilvidigez, Tares a zeske gant mistri gouziek an oll skianchou anavezet en amzer-ze. Spered ar bugel a oa digor, setu ma teuz e berr amzer da veza eun den euz ar re vouziieka.

Choazet e oue da eskop, ha kerkent ar zant en em lakeaz e tro da reiza guelloc'h c'hoaz he vuez he-unan, hag hini ar bobl; evit-se, e lakeaz urz vad en he di, evel en eur gouent. Maga a rea bemdez eur maread peorien: he unan e serviche anezo. E kenver an hosti zakr, he garantez a oa ken tener, ma 'z oa eaz anaout e tenne euz an oferen grasou puill ha saour evit he galon; evelse ne vanke morse d'he lavaret, ha bevech gant eun devotion vrasoc'h.

He spered lemm a veze bepred o labourat, klask a rea an tu da ober d'an heretiket hanvet: « Ikonoklastes, » pe: « Bruzunerien imachou, » distrei d'ar relijion gatholik. Ho sklerijenna a rea, guech hini hag hini, guech a vodadou, dioc'h ma c'helle ho c'haout; bez' en devoue ar joa da velet eur c'halz anezo o tistrei da henori skeudennou ar Verchez hag ar zent.

Petra benag m'en doa brud ar zant da veza dousa hag humpla den a oa e kear, ne oa ket startoc'h evitan pa veze hano da zifen gloar Doue hag he zent. An impalaer Konstantin VI, mab ar rouanez Iren, var zigarez ne blije mui he bried d'ezan ha ma tle eun impalaer beza mestr d'ober kement a dro en he bem, a gasaz he

c'hreg kuit, evit rei kurunen aour ar rouanez d'eur plac'h pe vatez. Ar zant a ziskleriaz dirak an oll e oa kement-se eur pec'hed braz, eur skouer fall euz ar re voasa, hag e c'houzanvje mil maro kentoc'h eget rei he asant d'eur seurt tra. « An impalaered, emezan, a dle » plega da lezen Doue koulz hag ar re zisterra euz an » dud », ha pa glaskaz Konstantin dont d'an iliz, e reaz serri an or dirazan. Tud al lez, kounnaret, a reaz taolev an eskop er prizoun.

Ar zant, leun a fizians e Doue, he galoun e peoc'h pa 'z eo guir en doa great he zever, a c'hedaz neuze sikour euz an env. An Aotrou Doue ne zaleaz ket da skei, hag an impalaer a gollaz en eun taol he gurunen hag he vuez.

An eskop santel a c'hellaz neuze ren a nevez he eskopti, evel diaraok; hag a stagaz da ober guelloc'h c'hoaz. oll zeveuriou he garg. Great en doa sevel, er Bosphor, divar he goust, eur gouent evit ar venec'h; pa c'helle tec'het eno, e tremene he amzer o kinnig he labour hag he vuez da Zoue.

Goude beza gouarnet Iliz Konstantinopl epad daou vloaz var 'n ugent, ez eaz da reseo en env he rekompans, d'ar 25 a viz c'hoevreur 806.

SONJOMP ERVAD :

Pebez devosion oc'h euz-hu evit sakrifis santel an oferen? Pa gavit tro da glevet an oferen d'an deiziou pemdez, ha soursiuz oc'h-hu da vont d'an iliz?

E pe doare he c'hlevit-hu da zul ha da c'houel? Daoust ha ne joumit ket en iliz henvel ouz eur peul, heb sonjal en oferen, mall ganeoc'h redet er meaz kerkent ha ma vez achu? Evit klevet ervad an oferen, sonjit e passion hag e maro Hor Zalver; ouspenn-ze, er zakrifis-man, Jesus en em ginnig d'he Dad eternal evit silvidigez ar re veo, hag ar re varo.

Selaouit eta an oferen gant an doujans hag ar garantez o pefe bet var menez Kalvar, o velet Jesus o skuill he c'hoad sakr evidoc'h.

Er penn kenta euz ar zakrifis santel, kinnigit da Zoue an oferen a 'z it da glevet hervez ar peder intansion a dle pep kristen mad da gaout : 1° evit adori an Oll-C'halloudeg,

krouer ha mestr pep tra; — 2° evit he drugarekât euz an oll grasou en deuz roet d'eomp; — 3° evit goulén ar pardon euz hon oll bec'hejou; — 4° evit goulén an oll grasou m'on dezo ezom anezo en amzer da zont.

It da gommunia alies a c'helloc'h evit senti ouz Hon Tad Santel ar Pab ha mennoziou an Iliz; pa ne c'helloc'h ket tostât ouz an daol zantel, kommuniit a galoun, da lavaret eo, grit an aktou a rafac'h ma 'z afac'h da gommunia e guirionez, ha goulennit digant Jesus kreski ho karantez evitan.

AR C'HOUECHVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVREUR

Santez Mac'harit a Gorton

(1249-1297)

Mac'harit, lezhanvet a Gortôn, abalamour ma reaz eno he finijen, a oa ginidik euz an Toskaan. Koll a reaz he mam d'an oad a zeiz vloaz, hag e choumaz heb deskadurez; neuze, heb den d'he c'helen na d'he ren, heb doujanz Doue na doujanz he zad, Mac'harit a heuliaz ioulou direiz he c'haloun, hag a gouezaz en dizurziou brasa. He mam gaer ne zelle nemeur outhi.

Nao bloaz e oue o ren eur vuez a voall-skouer gant eun dijentil euz ar vro; met eun deiz, an den iaouank-se a oue lazet, heb gouzout dare da zen. Daou zezez goude, Mac'harit a oa oc'h ober eun dro vale, pa zeuz daveti kiez vian an dijentil, o klem, en eur jacha var he zae evit ober d'ezi mont d'he heul. Mac'harit a heuliaz ar giez, ha dizale e kavaz dindan eun horden geuneud, korf an dijentil maro, goloet a c'houlou, ha c'houez fall gantan dija. Ar guel euz eun dra ken heuzuz a skoaz eun taol poumner en he c'haloun, sonjal a reaz e Doue en eur grenna gant ar spount. Kemeret a reaz neuze kement a geuz hag a c'hlac'har euz he fec'hejou, ma n'e doa ken c'hoant nemet kaout ar pardoun anezo. Mont a reaz en eur vouela d'en em strinka da dreid heg.

zad, o c'houlenn pardoun digantan euz an disprij e doa great anezan, he bedi a reaz d'he dere'hel en he di evit he zenna diouz ar pec'hed: « Guelet a reot ho merc'h, emezhi d'he zad, o rapari faotou he buez tremenet. » He zad, o velet glac'har Mac'harit, a bardounaz d'ezhi evel tad ar mab prodig, ar rann-galoun e doa great d'ezan, hag he digemeraz en he di, met he lez-vam, kriz ha digaloun, he c'hasaz kuit. Mac'harit a oa neuze pemp bloaz var 'n ugent (1273).

Mont a reaz er meaz euz an ti, enkrezet he c'haloun; azeza a rankaz e liorz he zud, hag e reaz ar zonzj da joun eno da vervel gant an naoun: aon braz e doa na ofansfe c'hoaz an Aotrou Doue. Neuze, en eur zellet etrezek an eny, e lavaraz en eur hirvoudi: « Oh! Salver Jesus, dis- » trei a rit davedoc'h kalz a eneou bemdez, daoust ha » didruez e viot ouz va ene paour-me? Va ene a zo » koustet d'eoc'h kement a boan hag hini Mari-Mada- » len, kement hag hini ar bec'herez Thaïs! Va Doue, » skuillet o peuz ho koad evit va frena, n'am dilezet ket, » bezit truez ouzin. » Neuze e teuzaz d'ezhi ar zonzj da vont da gear Kortôn. Eno ez eaz da ziskleria d'eur be- leg he buez direol gant eur guir gontrision, ha goulenn a reaz digantan petra a rankje da ober evit savetei he ene. He zad kovesour a sklerijennaz anezhi gant dousder: « Bezit fidel, emezan, d'ar grasou a ro Doue d'eoc'h, ha » renit eur vuez a binijen. »

Goulenn a reaz neuze mont e trede Urz sant Fransez, met relijiused Kortôn a reaz d'ezhi gortoz: Mac'harit a rankaz ober pinijen ha rei skouer an oll vertuziou epad pevar bloaz araok kaout guiskamant an Urz. He c'harantez evit an Aotrou Doue a oa ker braz ma teuzaz da voug en he c'haloun pep karantez evit ar bed.

Evit rapari ar skouer fall e doa roet, Mac'harit a c'houlenne pardoun digant an dud, hag a rene eur vuez santel; evit paea dle he fec'hejou, e rea pinijennou braz.

Hor Zalver he-unan a reaz d'ezhi goale'hi mad he ene dre eur govesion jeneral hag a badaz meur a zevez; e serr ar govesion-ze, Jesus a reaz « Va merc'h, » anezhi. Hor Zalver a lavaraz d'ezhi ouspenn: « Goale'het o peuz

ken neat ho puez a zizurz, dre ho taelou hag ho pinijen, ma viot e renk ar guere'hez ed em baradoz. » Mervel a reaz er bloaz 1297.

He c'horf miret ouz breinadurez ar preneved a zo c'hoaz e Kortôn, en iliz Tadou Sant-Fransez. Ar Pab Benéd XIV en deuz he lakeat e renk ar zentezet, er bloaz 1728.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar bec'herez-man a zistro ouz Doue o velet korf maro ar paour-keaz dijentil en doa he c'holllet. Ar pec'her a varvaz en eun taol en he bec'hed, hag a reaz da Vac'harit, ker fall hag hen marteze, distrei var hent ar zilvidigez. Bezomp mad, evel di, da entent ar c'henteliou a vezo roet d'eomp gant an Aotrou Doue.

Nag a zrouk e deuz great he lez-vam d'ar zantez-man! Mac'harit a oa eur plac'h iaouank koant-dreist ha karantezuz; he lez-vam, e leac'h sellet outhi, a oue digar en he c'henver. Mac'harit en em roaz neuze d'ar bed, pa 'z eo guir ne gave ket a garantez en he zi.

Pa deuz Mac'harit da jench buez, al lez-vam a oue var nez ober d'ezhi mont var he c'hiz, o taoler anezhi er meaz euz ar gear, hag o prenna an or outhi.

Eul lez-vam, pa deu en eun ti, a dle ober henvel da oll vugale he fried. Na zanto ket he c'halon o tomma gant he lez-vugale kement ha gant he bugale he unan, guir eo, met ober a dle henvel d'ezho oll. Lezen Doue eo, rak ar vugale a zo oll er gear, e ti ho zad.

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Sant Ian a Vandier

Ian a c'hanaz en eur geriaden hanvet Vandier, el Lorreen, vardro ar bloaz 900, hag a oue savet e doujans Doue gant he dud. Koll a reaz he dad, pa oa iaouank c'hoaz, setu e oue red d'ezan choum er gear da zikour he vam.

Beva a reaz pur ha chast epad he iaouankiz; evelato, o veza ma oa er bed, ne zervichaz ket an Aotrou Doue ker mad ha m'en defe gellet ober. Aketuz e oa da lavarret he Bater bep mintin ha bemdez, met dibarfet e veze enni, he spered a veze aliez o redet, o sonjal e traou all; dont a rea da ofisou an iliz, choum a rea zoken hed an noz da bedi, eur vech en amzer en iliz, met goude ec'h en em roe adarre d'ar bed, hag e klouarea e servich Doue. Karet aoualc'h en defe en em rei oll da Zoue, met lavaret a rea: « Red eo d'in choum er bed, evit sikour » va mam. »

Eun devez, eur plac'h iaouank a reaz mez d'ezan. Epad m'edo o kaozeal ganti, e velaz eun tam mezer gros var he dioukoaz, hanter-guzet dindan he dillad all. Ian a c'houlennaz: « Petra eo ar pezh dillad kaled-se? » Ar plac'h iaouank a ruziaz da genta, met da c'houde e lavaraz: « An dra-ze a zo eun tam dillad reun. Beva a » rankomp er bed-man, guir eo, emezi, met ne dleomp » ket beva evit ar bed-man. Kalz tud en em goll o rei » d'ho c'horf he oll eazamanchou, me a fell d'in savetei » va ene. »

Ar c'homzou-ze a ieaz doun e kaloun Ian Vandier. « Siouaz d'in, emezan, na me a zo bet lezirek! Nag a » amzer am euz kollet o ren eur vuez dibredet. Ha piou » a ro kentel d'in? Eun tamik maouez a netra! eur » plac'hik! Hi a vale soun he fenn ganti, var hent ar » binijen, eat eo pell dija var an hent-se, ha me siouaz! » n'oun ket diblaset c'hoaz. Eur vez eo evidon. »

Divar neuze, Ian a jenchaz evel eun all en he blas. Ne oa ket eur goall gristen araok, lezirek e oa bet eun nebeud, ha netra ken; met divar an devez-se, na gavaz pinijen ebet re galet evitan. Iun a rea bemdez, choum a rea da bedi pell hag hir en noz, kastiza a rea he gorf e peb doare, tec'het a rea diouz oll plijadureziou ar bed en eur veva he-unan gant Doue. Deski a reaz dindan envor ar Skritur zakr penn da benn, studia a reaz lezennou an Iliz koulz ha bueziou ar zent brudeta evit kaout skoueriou kaer a vuez kristen, mont a reaz da bardouna d'ar plasou santela evit kaout grasou puill

digant Doue, hag erfin e choumaz heb dibri morse an distera tam kig.

Evit pellât muioc'h diouz ar bed, ez eaz en eur gouent, striz an urz enni; eno an Abad a reaz d'ezan meur a vech kaout truez ouz he gorf, rak c'hoant en doa da ober re a binijen.

Hanvet e oue Abad he-unan er bloaz 960, ha ren a reaz he venec'h epad trizek vloaz gant furnez eun eal ha madelez eun tad. Mervel a reaz var dro ar bloaz 973.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz roet, epad he iaouankiz, ar peb brasa euz he amzer da Zoue; evelato ne lavare ket a greiz kaloun: Me a vezo da Zoue hebken. Eur plac'h iaouank a reaz mez d'ezan dre he buez piniennuz; goude beza komzet ganti e lavaraz: « Hiviziken me a vezo da Zoue hebken. » Delc'her a reaz mad d'he c'her.

Ha ni; ped guez n'on deuz-ni ket lavaret da Zoue: « Va » Doue, me a vezo d'eoc'h, ha d'eoc'h hebken, divar hirio. » Ar c'homzou-ze a vezo lavaret kalounek goude eur govesion, eur retred, eun adoration, eur mission. Chench a reer buez evit eur pennadik; prestik goude, an den a zo kouezet adarre en he goch koz. Petra vank d'eomp? Ne lakeomp ket doun aoualc'h en hor spered ar ger-man: « Red eo d'in » chench, red eo d'in savetei va ene. »

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ C'HOUEVRER

Sant Ruelin, Eskop

Ruelin a oa ginidik euz a Vreiz-Vraz, hanvet da c'houde-ze Bro-Zaoz. Mont a reaz d'ar gouent pa oa iaouank c'hoaz; aon en doa da goll he ene o choum er bed.

An den iaouank a oue brudet buan dre he aked da heuil reolen an Urz; ar gouent a oa renet gant sant

Tugdual, eur mignoun braz da Zoue. Ruelin a gavaz etouez he Genvreudeur menez'h santel: sant Guevroc, sant Briac, sant Gomri, sant Loevan; eaz eo servicha Doue pa vez kalz tud santel asamblez.

D'ar mare-ze, e oa nebeud a feiz e Breiz-Izel; relijion Jesus-Christ a oa nebeut anavezet. Ha setu, eun nosvez, eun eal a gomzaz ouz sant Tugdual dre he gousk, hag a lavaraz d'ezan: « Savit, kuitait ho kouent hag ho pro, » hag it da Vreiz-Izel. » An Abad santel a zentaz ouz mouez Doue, lavaret a reaz kenavo d'he venec'h glac'haret, kemeret a reaz gantan Ruelin hag unnek ha tri-ugent manac'h all, hag ez eaz ganto var an aod braz. Eno e kavjont eur vag prest da ziblas; antronoz, sant Tugdual hag he zaouezek ha tri-ugent diskibl a zouaraz tostik da Gonk-Leon, var douar Plounger.

Kenta a rejont, a oue sevel eur gouent e Trebabu, evit kana meuleudiou an Aotrou Doue, hag ober pinijen evit pec'hejou an dud; met dont a reaz kement a dud iaouank da c'houlén beza resevet e renk ar venec'h, ma oue kalz re vian ar gouent e herr amzer. Sant Tugdual, hanvet ive sant Pabu, a gemeraz neuze sant Ruelin hag eun nebeut diskibien all, hag a 'z eaz ganto da Landreger; eno e savjont eur gouent brasoc'h ha kaeroc'h, hanvet kouent Trekor. Eskop Treger o veza deut da vervel, sant Tugdual a oue choazet evit dele'her he blas, mont a reaz eta da joun da Landreger, men a reaz an eskopti epad ouspenn tri-ugent vloaz.

P'en em velaz dinerzet gant an oad hag ar c'hlenved, an eskop koz a c'hoanteaz mervel e kouent Trekor: karet a rea al leac'h santel-ze. Eun devez ma oa ar peb brasa euz he venec'h bodet en dro d'ezan, e c'houlennaz diganto en em glevet gant an dud a iliz evit henvel var he lerc'h eun eskop mad, hag e c'houlennaz diganto da biou e sonjent rei ho mouez. Den ne lavaraz grik da genta, met goude beza choumet eur pennad d'en em zonzal, an oll a lavaraz: « Tad, livirit d'omp piou a » dleomp choaz, ni a zento ouzoc'h laouen-braz. » Neuze an eskop devot a reaz eur beden birvidik d'ar Spered-Santel, hag a ziskleriaz: « Ruelin eo ar guella hini a

» dleit da gaout da eskop: furnez, gouiziegez ha santelez » en deuz dreist ar re all, hanvit eta anezan. » An oll a lavaraz ia, hag an eskop a dremenaz, goude beza roet d'ezo he vennoz diveza.

Er guella parkad ed ez euz eur pennad draok benag; etouez an dud a iliz euz kear Landreger, unan, Pergat he hano, a gavaz diez guelet eun all hanvet da eskop: dispenn a reaz eta Ruelin, ar goasa ma c'hellaz. Lod a zavaz gantan, lod all a joumaz a du gant Ruelin, dre m'o doa roet ho ger da zant Tugdual, setu ma oue rannet an dud e diou gostezen.

Pa deuaz an deiz merket evit henvel an eskop nevez, setu ma oue guelet an Aotrou sant Tugdual oc'h en em ziskouez en eur sklerijen gaer d'an oll dud estlammet: rebech a reaz da Bergat he ourgouil hag he fallagriez, ha lavaret a reaz eun eil guech: « henvel a reoc'h Ruelin » da eskop. » Bergat a c'houlennaz kerkent pardoun digant ar zant, ha Ruelin a oue hanvet eskop gant an oll.

Sakret e oue er bloaz 598, ren a reaz he eskopti evel eun eil zant Tugdual, ha kement-se ne deo souez: resevet en doa, epad keit all a vloaveziou, kenteliou an eskop benniget! Mervel a reaz er bloaz 641, goude beza gouarnet santelamant he eskopti epad 43 bloaz.

SONJOMP ERVAD :

Brasa talvoudegez an den eo santelez he ene. Pe c'houi a zo roue, pe c'houi a zo mevel en eun tiegez, mar demaoc'h e stad a bec'hed marvel, na dalit netra, e guirionez. M'ema hoc'h ene e stad a c'hras, ha pa vefac'h eur c'hasker bara, ha netra ken, c'houi a zo pinvidig. Klaskit atao madou an ene, dreist peb tra all, evel sant Ruelin.



AR CHENTA DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Albin, Eskop

Ar zant-man a deuaz er bed e kearik Langidik, tost da Hennebont, er bloaz 470. He gerent a oa tud a renk huel deut euz a Enez-Vreiz da jom e Breiz-Izel. Dibaba a rejont d'ho mab eur mestr skol gouizieg var skianehou ar bed, ha var ar relijion. O veza ma oa eur paotr spe-redek, Albin a zeskaz buan, met klevet a reaz mouez an Aotrou Doue o lavaret d'ezhan e goueled he galoun: Bez manac'h. Mont a reaz eta en eur gouent, e kichen Angers. Ne oue ket pell eno ma oue ar guella euz an oll venec'h, dirak Doue hag he Genvreuteur.

Iun a rea kalz, pedi a rea noz deiz: bez' e oa oll d'he zever evel eun eal, n'en doa en he galoun nemet karantez an Aotrou Doue; ker mad e oa evit he nesa, ken humbl e oa da velet, ma oa karet gant an oll.

Lakeat e oue, e bar he iaouankiz, da dad Abad er gouent; hanvet e oue gant he Genvreuteur pa n'en doa c'hoaz nemet pemp bloaz var 'n ugent. Albin, dre ma oa savet en eur renk hueloc'h, a boaniaz da veza hum-ploc'h ha santeloc'h: en em starda a reaz muioc'h mui ouz Doue, evit he zervicha guelloc'h, ha Doue a roaz d'ezan ar c'hras da ober burzudou; o tremen eun deiz dre gear Assis, Albin a roaz ar sklerijen d'eur manac'h dall. Epad pemp bloaz var 'n ugent e reizaz he gouent en eun doare santel, hag eun dra gaer e oa guelet devosion he venec'h.

Er bloaz 522, ar zant a oue hanvet, var goulén an oll, da eskop en Angers: karet en dije mervel en he gouent, met red e oue d'ezan plega da volentez Doue. Piou a lavaro vertuziou an eskop santel-man? nag a boan a gemeraz evit heuil he reolen a vanac'h! na peger braz madelez evit ar paour! nag a aked da derri

ar plegou fall! nag a ioul da gas atao var araok ar re a gerze gant hent stris ar vertus! Gant an dra-ze, he humilite a greske bemdez.

O veza eat eur vech da velet he vro Guened, ec'h en em gavaz gant sant Tugdual: he bedi a reaz da zont gantan da velet he eskopti Angers. Eno an daou zant o devoue ar joa da jom assemblez epad eur pennad am-zer, ha da gomz etrezo euz santelez an eneo. Albin a ieaz eur vech all da Baris da gaout ar roue Childebert. evit lakât ar roue-man da voda an dud a iliz e konsil, e kear Orleans. Great e oue eno lezennou strisoc'h evit ar veleien hag ar gristenien. Da c'houde, pa oue distroet an eskibien d'ar gear, na gredent ket embann al lezennou-ze, gant aon n'o defe displijet d'an dud chentil direol, met sant Albin a reaz da oll dud he eskopti pin-vidik ha paour, plega d'al lezennou-ze. Dougen a reaz an eskibien all da derri evel dan an oll blegou fall.

Goude beza renet he eskopti hervez gourc'hemennou Doue hag an Iliz, an eskop santel a rentaz he ene d'he Grouer, d'an deiz kenta a viz ebrel euz ar bloaz 550. Epad ouspenn seiz vloaz var 'n ugent e oa bet eskop Angers.

He gorf a oue enterret da genta en iliz Sant IPer e kear, met da c'houde e oue merket eun deiz evit dougen he gorf da iliz sant Stephan: d'an deiz-se tri zen dall a gavaz ar guelet en eur bedi sant Albin; meur a zen klanv all a oue ive pareet.

Devosion ar gristenien evit ar zant a zo en em skignet dre ar Frans a bez: euz eur penn d'hor bro d'egile e kaver parreziou, chapelou, ha kouentehou, ouspenn tri-ugent, hag o deuz kemeret anezan da Ba-tron.

SONJOMP ERVAD :

Sant Albin en doa lakeat doun en he galoun komzou Hor Zalver: « Poagnit da vont d'ar baradoz gant an hent striz. » — E guirionez, hent ar vuez a zo digompez hag amjest. Berr eo spered an den, dinerz he galoun ha fallakr an drouk-spered; ma laoskomp re a gabestr gant hor c'haloun baour

da heuil hent ar blijadureziou, e tigoromp an or d'ar pec'hed, d'an drouk-spered hag e kerzomp varzu an ifern. Dalc'homp berr var ioulou direiz hor c'haloun hag heuliomp an hent striz: guenoden ar vertuz, ar zantelez a gaso ac'hanomp d'ar baradoz. Goulennomp sikour an envou, ha gant grasou Doue en hor c'herc'hen, e c'hellimp dont a benn da c'hounit hor c'hurunen.

AN EIL DEVEZ A VIZ MEURS

SANT JAOUA, ESKOP

Jaoua, ganet en Irland, ha niz sant Paol a Leon, a ieaz varlerc'h he contr da Vreiz-Izel, met douara a reaz, gant he dud, e kichen kouent Landevennek. Pa oue bet eur pennad eno etouez ar venec'h, an abad sant Judul her c'hasaz da brezeg an Aviel da dud Braspartz. Meur a hini a zelaouaz ar zant, hag a oue devot; hinien-nou a joumaz troet var an ebaou fall.

Epad ma prezege e Braspartz, e sklerijenne ar c'har-teriz. Hogen, aotrou ar Faou, mestr ar vro-ze, paian hag enebour touet ar veleien hag ar venec'h, o velet ar vad a rea Jaoua, a vage, en he galoun, kasouni ar maro en he enep. Ha setu hen, eun deiz, o c'houzout e oa eun toullad beleien ha menec'h dastumet en eur gouent tost eno, o tiredet gant eur vanden dud dizakr. Lemmel a rejont prim en iliz: edot o kana an oferen. Laza a rejont sant Judul hag eur manac'h all c'hoaz; dre c'hras Doue, Jaoua a c'hellaz tec'het kuit.

Dourn Doue a gastizaz an dorfetourien-ze: Aotrou ar Faou a zeuz da veza possedet ha goall gaset gant an drouk-sperejou; hag eur zerpant braz a zifourchaz euz ar mor. Ar zerpant a lounke an dud hag al loened a gave var he hent, hag a daole ar strafil hag ar spout dre ar vro. Neuze tud ar Faou, o veza klevet gant Jaoua, pegen braz galloud en doa sant Paol a Leon dirak Doue,

her c'halvaz da zont d'ho zikour. An eskop santel en em lakeaz en hent; edo en em gavet e Koat-Garz, pa zigouezaz gant Jaoua hag he gompagnunez, deut d'he ziambroug. Sant Paol o velet o doa an dud-man sec'hed, a roaz he vaz da Jaoua evit skei var an douar; kerkent eun eienen a zinklaz eno.

Pa errujont er Faou, ar bobl a ziredaz daveto; sant Paol a reaz d'ezo eur brezeg, hag a lavaraz an oferen gant kalz a zevosion. Goude an oferen, divar dreujou an iliz, an eskop santel a lavaraz d'ar zerpant: « Mab an » ifern, deut aman dioc'htu, » hag euz toull ar zerpant e tifourchaz eul loen spontuz hag en em stlejaz betek ar zant. « Jaoua, eme sant Paol, sankit ho paz en douar, » ha stagit ar zerpant outi gant ar stol ». Jaoua her stagaz: hag ar zerpant a oue neuze evel eul loen don. Da c'houde, ez ejont da vaner Aotrou ar Faou, ha gant sin ar groaz, sant Paol a gasaz an drouk-sperejou er meaz anezan; he gelen a reaz var guirioneziou ar relijion, ha da c'houde, var urz sant Paol, Jaoua a roaz ar vadiziant da Aotrou ar Faou, d'he gerent, d'he zervicherien, ha d'ar re euz he zujidi ne oant ket c'hoaz badezet. Sant Paol a roaz d'ezan, evit pinijen euz he dorfet, urz da zevel eur gouent el leac'h m'en doa lazet sant Judul hag eur zant all: ar gouent-se a oue hanvet Daoulas.

Sant Paol a ieaz, da c'houde, en hent varzu Kastel o vleina ar zerpant d'he heul. Edo en em gavet e Koat ar zerpant e Lezerazien, pa zeujot da lavaret e oa choumet er Faou eur zerpant iaouank ha gallouduz dija; an eskop santel a reaz d'ar zerpant braz mont da gere'hat he hini bian, hag ho c'hasaz ho daou da Enez Vaz: eno e varjont.

Pa oue peurachuet kouent Daoulas, Jaoua a ieaz di da jom, met meur a hini euz ar vro en em glevaz gant tud fall euz a Vraspartz evit ober brezel d'ar zant. Hen, neuze, a dec'haz da Gastel, hag eno, sant Paol a reaz d'ezhan ren he eskopti. Ober a reaz he labour gant furnez ha santelez, evel sant Paol en he raok.

Hogen, nag e Braspartz nag e Daoulas, tud ar vro na c'hellent kaout tam eost ebet, abaoe ma oa eat Jaoua diouto. Sevel a reaz neuze keuz ganto da veza bet ker fallakr e kenver ar zant, ha glac'haret oll, e tigas-chont tud d'he bedi d'ho zikour. Mont a reaz en dro, hag ober a reaz e guirionez kalz a vad, met koueza a reaz klanv braz, hag e varvaz etre divreac'h sant Kenan.

SONJOMP ERVAD :

Sant Jaoua a roaz a vianik ar skouer euz an oll vertuziou: evel ar Mabik Jezuz e kreske bemdez en oad hag er zantelez. Na mad ha kaer eo d'an den servicha Doue abred! Neuze, pa vez ar galoun diouallet mad, ez eo evel eul liorz ha ne vez ket lezet enni al louzeier fall da zevel; choum a raio kempen, ha ne roio nemet bleunioù ha frouez a zantelez.

AN TREDE DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Guenole, Abad

(461-532)

Sant Fragan ha santez Guen, tad ha mam ar zantman, a oa ginidik a Enez-Vreiz. Bez o doa daou vab, sant Jakut ha sant Guethenok, pa zirrollaz ar brezel var ho bro. Treuzi a rejont neuze ar mor evit dont da Vreiz-Izel, douara a rejont tost d'al leac'h m'eman breman Sant-Briek. Mont a rejont da glask eur plas da jom el leac'h hanvet Ploufragan: eno, er bloaz 461, santez Guen a lakeaz er bed he zrede mab: « Guen oll e! » emezo, ha setu aze an hano a zougaz.

Seiz vloaz goude, sant Fragan a oa, eun deiz, o tiouall he loened, pa oue pilet d'an douar gant eun tarz kurun, ha neuze Doue a c'houlennaz he vab digantan.

« Va Doue, emezan, d'eoc'h-hu eo evel ar re all, her c'hemerit eta en ho servich. » Sant Fragan pa zeuaz

d'he di, a gemeraz Guenole hag her c'hasaz da enezen Lavre d'an doktor braz sant Budok, en doa eno eur skol brudet meurbet.

Guenole a oa, a vianik, douget da ren eur vuez santel hag hervez Doue, met e skol sant Budok ez eaz c'hoaz var vellât; kement a spered en doa ma teskaz, e nebeut amzer, ar Skritur sakr ha kalz levriou devot. Ne zaleaz ket pell da ziskouez en doa muioc'h a skiant hag a furnez eget nikun euz ar vugale hag an dud iaouank a oa gantan er skol, met klask a rea ar zantelez muioc'h eget an deskadurez. Ober a rea pinijen, noz deiz e sonje e perfeksionou Doue, miraklou braz a rea dre vertuz sin ar groaz.

N'en doa nemet eur bloaz var 'n ugent, pa lavaraz he vestr Budok d'ezan: « Bolontez Doue eo ma 'z afac'h » da zevel eur gouent d'eul leac'h all. — Guenole a gemeraz unnek manac'h, a zeuaz d'an douar braz ganto ha neuze ez ejont en hent en avantur Doue. Bale a rejont varzu ar c'huz-heol, heuil a rejont ster Kastellin tost betek ar mor braz, hag ee'h en em gavjont dirak eun enezen, kaer da velet, hag hanvet Ti-Bidi pe ti ar beden. Treiza a rejont betek enni; hag o veza savet lochenigou, ee'h en em rojont da ren eur vuez santei meurbet. An avel dro a voal-skoe an enezen, ha goude beza tremenet tri bloaz eno, e treuzjont ar mor evit mont d'an tu all da glask eul leac'h goasketoc'h: eno e savjont, e kichen an deven, eur gouent hanvet Landevennek. Ar roue Gralon a zeue aliez dre eno, hag a reaz anaoudegez gant Guenole hag he venec'h: douarou braz a roaz d'ezo.

Sant Korantin, o veza lakeat da Eskop e Kemper, a roaz da Venole ha d'he venec'h Urz sakr ar velegiach.

Epad ma roe ar venec'h skouer vad d'an dud dre ho buez santel ha pinijennuz, e sklerijennet ar re iaouank dre ar c'henteliou gouiziek a roent d'ezo: deski a reat e skol gaer Landevennek an oll skianchou a oa anavezet neuze.

Deut da veza koz, Guenole ne zonje mui nemet en eun dra: mont gant Doue d'he varadoz. En deiz araok ma

varvaz, e oa er japel o pedi dirak ar zakramant meulet ra vezo! En eun taol, e teuaz eur sklerijen skeduz en iliz hag eun eal a lavaraz d'ezan e varvfe d'an deiz varlerc'h; sant Guenole a joumaz en iliz da dremen an noz ha da renta bennoz da Zoue. Dioc'h ar mintin, e c'halvaz en dro d'ezan he venec'h, hag e tiskleriaz d'ezo komzou an eal. Doue a roaz d'ezan nerz da lavaret an oferen, kommunia a reaz he vugale, hag e roaz d'ezo he vennoz diveza. Neuze e pedaz sant Guennaël d'he noui; da c'houde, sant Guenole a joumaz dirak aoter ar Zakramant, en he zav, harpet var daou vanac'h; hag e keit ha ma oa ar venec'h all en dro d'ezan o pedi Doue, e rentaz he ene kaer d'he Zalver, er bloaz 532, var a greder: d'an oad a 71 bloaz.

SONJOMP ERVAD :

Sant Guenole hag eleiz a zent a zo falvezet ganto tremen ho buez pell dioc'h trouz ar bed: perak kement-se? Abalamour, emezo, ma 'z eo ar bed leun a riskl evit silvidigez an ene. Guir pe c'haou e lavarent-hi? Guir e lavarent, rak anzao a ranker eo troumpluz ar bed, ne c'hell rei nemet maged d'an dud her c'har. Pa 'z eo guir eo red mad d'eomp choum da veva er bed, diouallomp da viana na stagfemp hor c'haloun ouz ar madou a ginnig d'eomp.

AR PEVARE DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Kasimir, Skouer ar Yaouankiz (1458-1484)

Kasimir, ganet er Pologn er bloaz 1458, a oue an trede euz a drizek krouadur roue ar vro gristen-ze. Savet ha kenteliet gant eur vam vad, ha gant eur beleg santel ha gouizieq, ar prins iaouank, eur spered lem d'ezan, a deuaz e berr amzer da veza desket ha devot

braz. He vella eürusdet a oa tremen meur a heur eharz treid an aoteriou, ha pa veze lavaret d'ezan e tlie mont da gemeret he blijadur etouez an dud iaouank euz he renk, e respoune: « Ar re all a zo eun dudi evito beza » o pourmen, o c'hoari pe o chaseal; guell eo ganen » choum en iliz, asambles gant Jesus-Christ. »

He garantez evit Hor Zalver benniget a oa ker birvidik ha ken tener, ma tirolle da lenva ha ma 'z ea er meaz anezan he-unan pa zonje en he Basion hag en he varo var ar Groaz. Ar garantez en doa ar zant evit Jesus-Christ ne rea ket d'ezan ankounac'hât ar Ver-c'hez gloriuz Vari: seulvui e kare mab Doue, seulvui e kreske he zevosion evit he Vam benniget.

E leac'h kana guerziou difoun, evel tud ar bed, Kasimir a oa he blijadur kana eur c'hantik kaer, anavezet breman dre ar bed oll. Setu ama diskan ar c'hantik-se e brezounek:

Gloar da Vari,
Ha meuleudi,
Pebez burzud evuruz;
Mari guerc'hez,
Ha mam ivez
Guerc'hez ha mam da Jezuz.

Goude beza lavaret ar c'hantik-se gant devosion hed he vuez, ar Zant a c'houlennaz, araok mervel, ma vije lakeat gantan en he vez. Doue a reaz eur burzud kaer evit diskouez d'an oll pegement e plije d'ezan devosion he zervicher: pa oue digoret he arched, c'houec'h ugent vloaz goude he varo, e oue kavet paper ar c'hantik dindan he benn; ar skritur a oa ker flamm ha pa vije bet nevez skrivet, ha korf ar Zant a oa fresk-beo, heb breinadurez ebet.

Ar prins santel-man a oa leun a zousder evit an oll, leun a druez evit ar beorien. Bez' e oa ho zad, ho zervicha a rea he-unan evel an distera euz an dud, betek ma teue an dudchentil all da rebech d'ezan ee'h en em izelea re. Met hen a respoune d'ezo: « Ar brinsed, an » dud vrasa zoken n'en em izeleont ket o servicha ar

» beorien, rak ar re-man a zo ive memproù Jesus-
» Christ. »

Ma oue ar zant-man skouer ar brinsed iaouank dre he vertuziou kristen, kaera a velet ennan a oue evelato ar vodesti. Gant aon ne vefe deut lilien gaer he burete da veza sklabezet, e kastizaz abred he gorf dre ar rusta piniñen.

Lavaret a reer ne goezaz biskoaz e pec'hed marvel ebed, gwestla a reaz abred da Zoue he gorf hag he spered, evit ho miret atao pur. Mervel a eure d'he bemp bloaz var 'n ugent, goude beza choumet pell da zinerza a nebeudou: mall en doa da vont gant Doue d'he varadoz.

SONJOMP ERVAD :

Sant Kasimir a zo en em viret atao pur ha chast hed he vuez. Ar burete a zo eur vertuz diez-braz da ziuall, met ar zant-ma a zo bet sikouret gant Doue, abalamour m'eo bet eun den humbl ha piniñennuz.

Ne c'helloc'h ket, c'houi ken nebeut, miret heb poan tenzor kaer ar burete, tentet e viot noz-deiz, e pep leac'h hag e peb amzer, guech muioc'h, guech all nebeutoc'h; met ar vertuz dispar-man ne vezo biken paet re ger.

Ar pezh a zo diez d'an den a zeu da veza eaz gant sikour an env. Den ne c'hell beva chast, ma n'en deuz ar c'hras-se digant Doue, guir eo; met ker guir all eo ive n'en deuz biskoaz nac'het Doue he c'hras d'an neb en deuz he goulennet ha poaniet d'he c'haout. Difiziit eta ac'hanoc'h oc'h-unan, bezit humbl, goulennit sikour an env, ha Doue a roio d'eoc'h ar grasou oc'h euz ezom anezho evit ma viot treac'h d'an dentasion.



AR PEMPED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Sane, Patroun Plouzane

Eun devez ma oa sant Patrik, abostol braz an Irland. O komz gant eun nebeut tud devot, ar re-man a c'houlennaz digantan petra zeuje ar vro da veza en amzer da zont. Hag ar zant a respontaz: « Genel a raio dizale » eur c'hrouadurik hag a vezo hanvet Sane, eur zervi- » cher braz da Zoue e vezo, peurachui a raio va labour » en enezen, hag eskop e vezo var va lere'h. »

Ger ar zant braz a deuaz da vir: Sane a c'hanaz prest goude; he dud a oa kristen. Pa oue kresket ar c'hrouadur, he dud a reaz d'ezan mont d'ar skol, peadra o doa, hag ar paotrik a oa lem he spered.

Pa oue echu he studi gantan, Sane a joumaz er gear, ha neuze ec'h en em roaz d'an devosion muioc'h e'hoaz eget araok. Doue, evit merka e tlie Sane mont lark var hent ar zantelez, a reaz meur a virakl evit ma c'helje an den iaouank rei muioc'h a amzer d'ar beden.

Gant aon n'en em golfe er bed, Sane a zavas eun ermitach, hag a iez da joum ennan gant eun toulladik paotred iaouank devot. Eun nebeut bloaveziou goude, sant Patrik, o c'houzout n'en doa mui pell da veva, a reaz d'ar manac'h iaouank dont betek ennan, rei a reaz d'ezan an Urziou sakr, ha goude-ze e tremenaz laouen: great en doa henvel Sane eskop en he leac'h.

An eskop nevez a stagaz a galoun vad d'al labour a oa choumet varlere'h sant Patrik, sevel a reaz kalz kouenchou evit skigna ar feiz kristen hag an deskadurez dre ar vro, sklerijenna a reaz kalz tud. Ar miraklou a rea sant Sane a roe nerz d'he gomzou ha d'he brezegennou. Eun devez, gant truez ouz tud he di, a oa red d'ezo mont pell da glask dour, e reaz sinkla eun eienen grenv tost-tost d'he gear.

Goude beza guelet ez ea mad an traou en Irland, ha sonjet a zevri er gentel a gaver en Aviel, e tle an den dilezel peb tra ha beva evit Doue hebken, ar zant a reaz henvel eun eskop all en he leac'h, hag a deuaz dre vor da Vreiz-Izel. Douara a reaz gant eun nebeudik tud e Plougonvelin, ac'hano ez eaz betek al leac'h hanvet abaoe Plouzane. Eno, var a leverer, e oa eun templ konsakret d'an doueou faoz; an eskop santel a brezegaz d'ar baianed a veve er vro, a sklerijennaz ho sperejou, a reaz kristenien anezo, hag a lavaraz he genta oferen e templ an doueou faoz, goude m'en devoue benniget anezan.

Guelet a reat, breman ez euz seiz-ugent vloaz, e guered Plouzane, eur groaz c'hlaz, hag en he c'hichen eur mean braz; ar mean-ze, dioc'h ma lavare Plouiz-Sane, a oa mean-aoter ar zant Patroun, pa oferenne en ho iliz. Ar mean-ze a zo bet lakeat en douar, var a leverer, er bloz 1779, da zikour diazeza mad an iliz parrez.

Evit ober eur vad peur-baduz er vro, Sane a zavaz, eur c'hart leo dioc'h an iliz, eur gouent hanvet hirio c'hoaz ar C'hloastr; ar vene'h a oa deut euz an Irland gantan, en em dennaz eno. N'o doa ket a zour, met ar zant a reaz eur beden da Zoue, ha kerkent e savaz eno eun eienen vad, hanvet hirio ive feunteun ar C'hloastr.

Goude beza kenteliet ha santeleat tud ar vro epad eun nebeut bloaveziou, ar zant a lavaraz kenavezo er baradoz d'al Leoniz glac'haret, hag a zistroaz d'an Irland evit mad. Ne joumaz ket pell eno na gouezaz klanv: mervel a reaz var dro ar bloaz 480.

Plouiz-Sane, evit henori ho zant Patroun ha goulen he vennoz varno har va ho ziegeziou, a ra bep bloaz « Tro Sant Sane », da vare goueliou ar Pantekost: eur maread anezho a ra neuze ho devosionou.

SONJOMP ERVAD :

Sant Sane a jenchaz bro hag a reaz kalz miraklou dre garrantez evit an dud, rak ar zent oll a zo bet karantezuz evit ho nesa.

Daoust ha n'oc'h euz ket a c'hoant, va breur, ha c'houi, va c'hoar, da veza karet gant Doue? Ha n'oc'h euz ket a c'hoant da veza pardounet, konsolet, sikouret gantan? Pardounit, sikourit da genta ho nesa, ha Doue ho paco.

AR C'HOUECHVED DEVEZ A VIZ MEURS

Santez Perpetua, Merzerez

En amzer an impalaer Sever, en doa goure'hemennet laza an oll gristenien, e oa e kear Karthaj en Afrik, eur c'hreg iaouank, daou vloaz var 'n ugent, hanvet Perpetua. Eur c'hrouadur e doa, he vaga a rea he-unan.

O veza m'e deuz ar zantez skrivet histor he merzerenti betek dere'hent he maro, e verkomp ama ar peb brasa euz he lavarou:

« Dont a rejot, emezi, da c'houlen diganen ha digant » pevar all c'hoaz ha kristenien e oamp. Ni a respountaz:
 « Ia, kristenien oump. Neuze e ouemp klozet en eun » ti, da c'hortoz ma vefemp taolet er prizoum. Va zad » a zeuaz d'am guelet en ti-ze, paian e oa, ha na c'helle » ket kredi e vije bet touellet he vere'h gant lezen eun » den maro var eur groaz.

» Alia a reaz ac'hanoun da nac'h va hano a gristenez, » met me a c'houlemaaz, en eur ziskouez d'ezan eur pod » pri a oa eno: Ha guelet a rit-hu ar pod-se? — Ia, » emezan. — Ma! emeve, daoust ha chench a c'heller » hano d'ezan? — Na c'heller ket, emezan. — Na me » ken nebeud na c'hellan diskleria nemed eun dra: bez' » ez oum kristenez.

» Va zad a zaillaz neuze ganen en he gounnar, heja » a reaz ac'hanoun, met tec'het a reaz buan kuit, pa » velaz ne c'houezeze netra varnoun.
 » Eun nebeut deveziou goude, e ouen taolet en eur

» prizoun henk ha tenval: rannet e oue va c'haloun pa
 » veljon e pe leac'h e oan kouezet. Ar zoudardet karget
 » da ziuall ar prizoun a oa kriz ha digernez; ouspenn-
 » ze, va c'hrouadur a oa bet tennet diganen.

» Var bouez paea ker, ar gristenien a c'hellaz digas
 » d'in va c'hrouadur, me a ententaz outan kerkent ha
 » ma oue roet d'in: ar c'heaz bian en doa great eur
 » iunaden hir.

» Eun nebeut deveziou divezatoc'h, va zad a zeuaz
 » d'ar prizoun, glac'haret oll, liou ar maro varnan.
 » Va merc'h, emezan, o pet truez ouz ho tad, c'houi an
 » euz karet atao dreist va bugale all, o pet truez ouz va
 » bleo guen; mar bezit kondaonet ha lazet dre zourn ar
 » bourreo, em bezo mez oc'h en em ziskouez etouez an
 » dud. Daoulina a reaz dirazon, pokat a reaz d'am
 » daouarn: beuzet e oa en he zaelou. Rannet va c'halon
 » o velet glac'har va zad, e respountiz d'ezan: Mervel
 » evit Doue n'eo ket eun dishenor, Hen a roio din eur
 » gurunen en he varadoz, eno e kavin ar guir eürusdet.
 » Va zad a iez kuit neuze.

» Deiz ar varnedigez, va zad a zeuaz dirazon gant va
 » c'hrouadur var pleg he vreae'h: Va merc'h, emezan,
 » bezit truez ouz ho krouadur, ma n'o peuz truez ebet
 » ouz ho tad. Ar barner a zavaz gant va zad: O pet
 » truez ouz he vleo guen, emezan, ha kinnigit ezans
 » d'an doueou.

» Kristenez oun, emeve. » Var gement-se, ar barner
 » va c'houndaonaz d'ar maro. »

Antronoz, deiz he merzerenti, Perpetua a iez er
 meaz euz he frizoun, laouen evel an heol. En em gavet
 var ar blasen, e reaz sin ar groaz da c'houlou sikour an
 Aotrou Doue; laosket e oue varni eur vioc'h pennfollet.
 Ar vioc'h a roaz eun taol korn evit he dibrada hag he
 zaoler en ear, met ne beurlazaz ket anezi. Unan euz ar
 zoudarded a deuas neuze, hag a roaz d'ezhi taol ar maro,
 d'ar 7 a viz meurz 203.

SONJOMP ERVAD :

Setu aze eur zantez hag a roaz he ger e choumfe fidel da
 Zoue; dalc'her a reaz d'he ger, en despet d'he zad, en despet
 d'ar barner, en despet d'ar bourreo. Pebez kentel evidomp-ni!
 Ped guech n'on euz-ni ket lavaret da Jesus-Christ: Me a zo
 d'eoc'h; ha kerkent ha ma kavomp diez servicha Doue, e
 kollomp kaloun, hag ez comp enep hor ger. Bez' on euz eur
 c'hoantegez benag da veva evel guir gristenien, met n'on
 euz ket eur volontez stard. An ifern a zo leun a c'hoantege-
 ziou mad. An dud daonet o deuz, meur a vech en ho buez,
 entetet e tlient diouall rak ar pec'hed, e tlient heuil gour-
 c'hemennou Doue. Ar zonjezonou mad-se a bade eur pen-
 nad, met siouaz! an oberou mad na zeuent ket. Ar zonje-
 zonou, ar c'hoantegeziou a zo evel ar bleun en eur vezen,
 petra servich d'ezhi rei bleun, ma ne ro ket a frouez? Trou-
 c'het e vezo, ha stlapet en tan. Ma n'on euz nemet sonjezo-
 nou mad, heb an oberou, n'on euz ket eur guir volontez, hag
 e kouezimp e tan an ifern.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Thomas Akin

(1225-1274)

Ar zant-man, ar brasa euz doktored an Iliz, a c'hanaz
 e rouantelez Napl, er bloaz 1225. Kaset e oue d'ar gouent
 d'he bemp bloaz, evit beza skoliet, rak he gerent, tud-
 chentil a renk huel, a vele ervad en doa eur spered kaer
 hag e oa troet var an devosion. D'he zek vloaz, e oue
 kaset d'eur skol hueloc'h, e kear Napl; eno ez eaz da
 vanac'h, hag he Zuperior, o velet he spered kaer hag
 he zevesion, a reaz d'ezhan mont da Baris da zelaou
 ar vistrí gouiziaka.

He vam troet gant ar bed, a gavaz temm guelet eur
 mab ker speredek o vont da vanac'h; skriva a reaz d'he

daou vab kosa a oa offiserien en arme, paka ho breur iaouank, var hent Paris, hag he zigas d'ezi. Senti a rejont. Ar vam, laouen-dreist o velet Thomas, a glaskaz ober d'ezan en em rei d'ar bed, met ar manac'h devot ne reaz van ebet evit klevet gourdr'ouzou pe bromesaou. Lavaret a rea atao: « Doue en deuz va galvet davetan, da Zoue e vezin. » Diou c'hoar ar zant, kenteliet gant ho mam, a boaniaz var ho breur d'ober d'ezan ehench: na c'houmesjont netra varnan; met hi, trec'het gant he genteliou, a iez ho diou da leanezet.

Etretant, daou vreur Thomas a zistroaz d'ar gear. Drouk enno o velet peger stard e oa en he feiz, e rejont kloza an den iouank en eun dourel euz ar maner: daou vloaz benag e choumaz eno. Met kaer a oue ober, Thomas ne fallgalounaz ket: treac'h e oue d'eur pez divezet kaset gant he vreudeur d'he denti.

Eun devez, ar manac'h iaouank a c'hellaz tec'het euz he brizoun gant sikour he ziou c'hoar, hag a skoaz var eün da Paris. Ac'hano ez eaz da Gologn da zelaou kenteliou ar brudeta doktor a oa en amzer-ze.

O veza ne gomze nemed oc'h red, ha c'hoaz nebeuta ma c'helle, ar skolaerien all o doa he leshanvet an Ejen mud, met ar mestr a lavaraz d'ezo eun devez: « An Ejen » ze a vlejo ker krenv, ma vezo klevet he vouez dre ar bed oll. » Ar c'homzou-ze a deuaz da vir.

Kerkent ha ma oue achu he studi gantan, e kenteliaz ar re all d'he dro; he skol a oue brudet buan, rak eun dudi e oa he glevet, ker freaz e tisplege ar virionez. Lavaret a rea en eur ziskouez he grusifi: « Hen eo va leor guella, desket en deuz d'in hiroc'h eget an oll leoriou all. »

Ar zant-man a reaz, var urz ar Pap Urban IV, offis ar Zakramant meulet ra vezo, kaera ha dudiusa kan a c'houfet da gaout. E pe leac'h ema ar c'hristen ne vez ket tenerreat he galoun pa glev kana evel ma 'z eo dleet: « Lauda Sion Salvatorem... Sacris solemnibus... Pange lingua. »

Eur zouez eo en defe gallet ar zant-man ober kement a labour en he vuez: roet en deuz ar c'henteliou huella

ha diesa er skolachou braz, skrivet en deuz kalz levriou kaer hag a zo eur sklerijen evit an Iliz santel, ha trec'het, dre he skridou, enebourien ar relijion gristen e peb amzer. Prezeget en deuz e meur a iliz hag e meur a gear, ha displeget dirak an oll ar Skritur sakr; en despet da-ze, en deuz heuliet atao reolen Urz sant Dominik penn-da-benn, choumet eo bet bemdez meur a heur da bedi Doue.

Ar zant braz-man a bede eun devez, daoulinet dirak he grusifi, pa glevaz mouez Hor Zalver: « Thomas, skri- » vet mad ec'h euz divar va fenn, pe seurt digoll az » pezo? » Respount a reaz kerkent: « Digoll all ebet, » nemedoc'h-hu, va Zalver. »

Ne oa ket c'hoaz hanter-kant vloaz, pa gouezaz guall glanv. Goulen a reaz ma vije diskennet euz he vele ha kousket var al ludu da reseo he Zoue e viatik; pres-tik goude e tremenaz, (1274). Hanvet eo bet eal an dok-tored, abalamour d'he burete vraz ha d'he spered dispar.

KENTELIOU SANT THOMAS

I. — An neb en deuz aon na ve ket brudet mad etouez an dud, hag en deuz poan pa vez disprijet, a vezo diez d'ezan beza eun den santel.

II. — An ene n'en em blij ket o pedi, ne ielo nemeur var araok e servich Doue.

III. — Ne ententan ket e c'helfe eun den e stad a bec'hed marvel, c'hoarzin na beza laouen.

IV. — Eun dra hebken a zo red evit ober ar zilvidigez: kaout guir volonteaz.



AN EIZVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Ian Doue (1495-1550)

Ar zant-man, ganet er Portugal er bloaz 1495, ha mab eur micherour paour, a dec'haz euz ar gear evit redet bro, pa oa iaouank c'hoaz. Red e oue d'ezan a benn eun nebeud amzer mont da zervicha var ar meaz, da c'hounit he voued; eno e choimaz pur ha glan.

Skuiza a reaz buan o labourat er parkeier, ha setu hen ha mont da zoudard. Kouezet fall e oa. Heuil a reaz guall gompagnuneziou, dilezel a reaz a nebeudou ar zakramanchou, he bedennou, hag e kollaz he burete.

Doue, dre druez outan, a gastizaz anezan; poan var boan a stage outan heb ehan. Digeri a reaz neuze he zaoulagad, senti a reaz ouz mouez he goustians, distrei a reaz varzu Doue dre eur govesion jeneral, great gant eur guir glac'har. Neuze ez eaz a nevez da redet bro, en eur verza imachou, hag e tigouezaz evelse e kear Grenad.

Selaou a reaz eno eun devez eur brezegen gaer great gant sant Per Alkantara, ha divar neuze e lavaraz: « Me a vezo da Zoue, da Zoue hebken, ha na rin van » ebet euz a lavarou an dud. » Hag ez eaz kerkent dre ruiou kear evel eun den diempennet, o skei var he beultrin, o chacha var he vleo, hag oc'h ober kement a ariezou ma oue kaset d'an hospital, etouez an dud diskiant. Sant Per Alkantara o veza deut di d'he velet, a gomzaz gantan pell hag hir; anaout a reaz e oa devet he galoun gant karantez Doue, hag e tifemaz outan ober he zod hiviziken. Ian a zentaz, choum a reaz evelkent en hospital evit entent ouz ar re glanv; anavezet e oue, e berr amzer, evit eur mignoun braz da Zoue.

O velet pegen dilezet e oa darn euz ar re glanv, pa veze paour ho zud, Ian a reaz he zonzj da zével eun hospital evit ho repui. Mont a reaz da gesta, evit kementse, e kear ha tro var dro, ha dont a reaz a benn euz he labour. He hospital a oue brasa hini a vije bet guelet er vro betek neuze. Eno e tremene he amzer o servicha ar re glanv, o skuba ho c'hamprou, o tresa ho gueleou, o louzaoui ho gouliou, o lavaret d'ezo eur gomz vad. benag; hen a oa evel mevel an oll.

O veza ne oa ken brud dre ar vro nemed euz ar vad a rea, kalz tud a galoun a zeuaz d'he zikour en he labour. Ar zant ho digemere laouen, a roe d'ezo aliou leun a furnez, hag a zeuaz en doare-ze da zével eun Urz nevez a venec'h evit entent ouz ar re glanv.

Pa 'z ea Ian Doue da c'houlén an aluzen evit he hospitaliz, e veze tenerreat kaloun an dud ouz he velet hag he glevet. Lavaret a rea dre ma 'z ea: « Grit aluzen, o » pezit karantez evidoc'h oc'h-unan, grit vad d'eoc'h » oc'h-unan »; setu aze e pe zoare e c'houlenne.

Daoust peger braz e oa he labour, e kouske atao var ar c'halet, iun a rea bep guener divar bara ha dour, kerzet a rea diar'hen, he benn bepret dizolo, memez pa veze skourmet an douar.

An tan guall o veza kroget eun devez en he hospital, an den santel, heb aon na nec'h, a redaz dre an oll gamprou; samma a reaz, an eil goude egile, eun niver braz a dud klanv, taoler a reaz ho gueleou dre ar prenestr, choum a reaz eun hanter-heur vad e kreiz eun tan skrijuz evit savetei he oll hospitaliz, ha tec'het a c'hellaz euz a greiz ar fourn c'horet-se heb an distera drouk.

Erfin, dinerzet gant al labour muioc'h c'hoaz eget gant he oad, e koezaz klanv he-unan, hag e resevaz he zakramanchou gant eur feiz beo. P'en em velaz var he dremenvan, e poaniaz da zével ha d'en em viska; ha goude beza daoulinet humbl e kichen he vele, e rentaz he ene da Zoue en eur bokat d'he grusif. Choum a reaz var he zaoulin, goude he varo zoken, heb diskregi euz he grusif, ha keariz a ziredaz da velet ar burzud-se. Bez' e oa pemp bloaz hag hanter-kant.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar zant-man a gare kement beza disprijet, ma reaz an neuz da veza kollet he benn evit beza lakeat e renk an dud diskiant. Deskomp gantan reseo gant humilite ha pasianted an disprijans a vezo taolet varnomp avechou: klas-komp plijout da Zoue ha ne raimp van ebet euz lavarou an dud.

AN NAVED DEVEZ A VIZ MEURS

Santez Franseza, Intañvez (1384-1440)

Ar zantez-man, ganet er bloaz 1384, a oa galvet gant Doue da veza skouer ar merc'hed kristen e peb stad a vuez. He zud a oa pinvidik hag o choum e kear Roum, met ar vere'h iaouank a reaz fae var madou ar bed, hag a c'houlennaz mont d'ar gouent. He zud a enebaz outi, hag hi, goude beza goulennet kuzul digant he c'hovesour, a blegaz d'ezo, hag a zimezaz d'eur paotr iaouank, brudet dre ma oa fur ha savet mad.

Betek neuze Franseza e doa poaniet da veva he-unan gant Doue, er beden hag en devosion; eur vech eureu-jet, ar c'hreg iaouank a reaz peb tra evit plijout d'he fried. Senti a rea dioc'htu, tremen a rea dioutan, hag epad an daou ugent vloaz ma vevjont asamblez, ne oue morse an distera ger etrezo. Daou grouadur o devoue, met mont a rejont abred gant elez ar baradoz.

Franseza a daole ar brasa evez var he zervicherien, ho gouarn a rea gant dousder, met ober a rea d'ezo beva e guir gristenien. Ar Bater vraz a veze lavaret bemdez en he zi, Buez ar Zent a veze lennet, hag ar gizioù santel-ze a rea d'he zervicherien choum star-toc'h en ho feiz.

En despet d'he renk ha d'he iaouankiz, Franseza ne heuilaz morse ar re a glaske an ebatou, ar plijadure-ziou; lavaret a rea pa glasket he deseo: « N'eo ket » lezennou ar bed, met lezennou an Aviel eo a dlean da » heuil. »

Abalamour da-ze e veze guisket atao gant ar brasa modesti.

P'e deveze eur pennad benag a anzer da zioueret goude beza lakeat urz en he zi, ha great he devosionou, ez ea da ober aluzen d'ar re baour, ha da entent ouz ar re glanv.

Ladislas, roue Napl, a gemeraz d'ar mare-ze kear Roum dre nerz he armou, laoskel a reaz he zoudarded d'ober skrab e tiez ar gristenien pinvidik, setu ma oue rivinet Franseza; ouspenn-ze, he fried a oue barnet d'an harlu. Ar c'hreg santel a zoublaz gant humilite ha pasianted da volonteaz an Aotrou Doue, lavaret a reaz: « Doue en deuz lamet diganen kement tra en doa » roet d'in, ra vezo meulet he Hano santel. »

Pa oue sinet ar peoc'h, pried Franseza a zistroaz d'ar gear, hag he oll vadou a oue rentet d'ezan. Divar neuze, an daou bried a vevaz evel breur ha c'hoar, hag en em roaz, muioc'h c'hoaz eget araok, d'ar beden ha d'an oberou mad.

Ar zantez-man a zougas atao dindan he dillad all eur porpant hag eur c'houriz reun; iun a rea aliez. Sevel a reaz eur gouent e kear Roum evit ar merc'hed o devije c'hoant da zervicha Doue hebken, rei a reaz d'ezo reolen Urz sant Beneat, gant eun nebeut kenteliou all leun a furnez hag a zevosion.

Goude maro he fried, e c'houlennaz beza resevet etouez al leanezed m'e doa savet eur gouent evito. Eno e oue evit an oll C'hoarezed eur skouer a humilite hag a basianted, kreski a reaz c'hoaz he finijennou, he iuniou, ha Doue he digollaz o rei d'ezi aliez eun tanva euz eürusdet ar baradoz. Guelet a reaz, epad meur a vloaz, he eal mad en he c'hichen, dindan furn eur c'hrouadur iaouank, guisket e guen, gant eur gened dudiuz.

Mervel a reaz erfin, er bloaz 1440, d'an oad a c'houec'h vloaz hag hanter-kant; he c'horf a veler c'hoaz hirio, e chapel he c'houent e Roum, ker kaer ha ma vije nevez tremenet, nemet eo duet gant an amzer.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Franseza e deuz bevet daou-ugent vloaz gant he fried, heb ma vije bet morse an disterra ger etrezo, dre ma n'e doa ken bolontez nemed he hini d'ezan. Eur c'hreg, da zonzal kaout ar peoc'h en he ziegez hag en he ene, a dle beza a du gant he fried, senti outan, kuitât an traou all evit ober he volontez; en eur ger, plijout d'ezan e kement tra n'eo ket enep lezen Doue.

II. — Ar zantez-man e deuz bet an heur da velet aliez he eal mad en he c'hichen, d'ar mare zoken ma oa c'hoaz er bed. Bez' e deuz bet ar c'hras kaer-ze digant an Aotrou Doue, abalamour, m'eo choumet atao pur, ker pur ha ma c'heller beza er stad a briedelez.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

An daou-ugent Merzer

Lisinius, impalaer e broiou ar Zaol-heol, a zougaz er bloaz 319, eul lezen a varo enep ar gristenien. Pa zigouezaz urs an impalaer en Armenii, pa oue gourc'hemennet d'an oll e Sebast kinnig ezans d'an idolou, daou-ugent soudard kristen a ziskleriaz a vouez huel ne adorjent biken an doueou faoz. Ar gouarner a reaz ho chadenna dioc'htu, hag ho lakât en eur prizoun tenval.

Goude beza poaniet epad meur a zevez d'ober d'ezo nac'h ho feiz, ar barner a zougaz ar zetans-man: « Tre- » men a raint an noz en noaz var eul lenn skornet ». Ar zetans a oa kalet rak ar skorn a oa teo.

E leac'h beza glac'haret, an daou-ugent a oue laouen o klevet ar barner, ha ne ehanjont da c'houde d'en em gennerza an eil egile. « Nag a bed guech, emezo, n'on » euz ni ket disprijet ar maro var dachen an emgann? » Hag evit petra? Evit eun nebeud henor, evit ober » plijadur d'hor roue. Breman oump soudardet Jesus- » Christ, peger kaer eo mervel evit ar roue-ze, a zo » maro evidomp da genta. » Ha neuze, en ho c'harantez birvidik, e lavarent, ho daoulagad savet etrezeg an env: « Daou-ugent emoump o vont var an dachen, roit » d'eomp, o va Doue, daou-ugent kurunen. »

Ar barner, kris ha dinatur, a reaz brevi ho oll dent d'ar verzerien: « goasoc'h kalz e krogo ar ienien enno, » emezan. An daou-ugent a c'houzanvaz ar iudazerez-se heb en em glem.

Pa dosteaz an noz, ar zoudarded kalounek a oue kaset var al lenn: ar skorn a oa kalet. En em ziviska a rejont ho-unan, gourvez a rejont var ar skorn, epad ma c'hoeze ar goardou eun tan braz: urz o doa da glouarât dour evit ar re o dije kollet kaloun. An daou-ugent a oue stard er penn-kenta euz an noz, pedi a reant dre ma teue ho izili da zounna.

Met setu, e kreiz an noz, eur sklerijen dudiuz o para azioc'h al lenn, hag unan euz ar goardou ha guelet nao eal ha tregont, renket en eun urz kaer, bep a gurunen ganto, azioc'h al lenn skornet. Ar goard paian a joumaz sebezet. « N'euz nemet nao ha tregont anezo, emezan » outan he-unan, e pe leac'h 'ta ema kurunen an daou- » ugentved? » Hag epad ma rodelle ar zonz-se dre he spered, e velaz eur reuzeudik, trec'het gant ar boan, o ruza da glask an dour klouar. Siouaz d'ezan! a veac'h en dour, e teuaz da vervel: koll a rea en eun dro hag ar vuez, ha kurunen ar verzerenti.

Evelato, peden ar verzerien a oa bet selaouet: goulennet o doa daou-ugent kurunen, ho mennoz a oue sevenet. Ar goard, sklerijennet gant kement en doa guelet, a ziskleriaz d'ar re all e oa kristen, hen ive; diviska a reaz he zillad epad ma rea he vignouned goap anezan; en em lakât a reaz e mesk ar verzerien zantel,

en eur c'houlou sikour ho fedennou. An den-ze, divadez goulskoude, ne fallgalounaz ket; pa darzaz an deiz en doa gounezet an daou-ugentved kurunen, nijet e oa he ene d'ar baradoz.

Korfou ar verzerien a oue devet, var urz ar barner.

SONJOMP ERVAD :

Pebez keuz eternal evit an daou-ugentved a fall-galounaz! Stourm en doa great evel ar re all, ar gurunen a oa tost, ha padal! setu hen o koll kaloun. Eur pennadik poan c'hoaz, hag en dije gounezet unan euz kaera kurunennou ar baradoz, hini ar verzerenti; ha brema, setu hen en ifern, o vlasphemi, o laoskel pec'hejou, malloziou. Ema eno evit atao.

Pegait eürusdet en deuz bet var an douar divar goust he bec'hed? A veac'h e oue en dour klouar, ma tremenaz.

Sonjomp aliez er gentel-ze, ha kendalc'homp da zervicha an Aotrou Doue.

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Santez Koletta, Guerc'hez

(1381-1447)

Ar zantez-man, ganet er Pikardii d'an 13 a viz genver 1381, a oue roet gant Doue da bedennou he mam; tri-ugent vloaz e oa houma p'e devoue he merc'h fian.

Kerkent ha m'e devoue skiant, Koletta a oue desket d'ezhi anaout ha karet Doue; he zud o devoa eur feiz krenv. Eur vech savet da veza paotrez krenn, ar vere'h iaouank ne oue ket troet var ar c'hoariou evel ar vugale all; he oll flijadur a oa pedi Doue en eun iliz benag, pell dioc'h an trouz. Rei a rea d'ar paour kement a c'helle dioueret gantan, pa oa c'hoaz bianik.

O veza klevet eun devez meuli he gened, e savaz aon ganti na zeufe d'en em goll gant meuleudi an dud, hag

e c'houlennaz digant Doue koll he liou flamm. Evit sikour an Aotrou Doue da rei d'ezhi he goulou, e reaz iuniou ha pinijennou kalet, hag abenn eur pennad he bizach a deuz da veza disliv.

D'he zrivac'h vloaz, ar plac'h iaouank a gollaz he zad hag he mam; guerza a reaz kerkent kement tra e doa var he hano, evit rei an arc'hant-se d'ar paour. Da c'houde, e klaskaz mont e meur a Urz leanezed, met ne gavaz en hini anezo eur reolen a vuez stris aoualc'h. Neuze e reaz sevel eviti eun toullik kampr oc'h moger eun iliz, ac'hano e klevé an oferen hag e reseve he Doue er gommunion zantel: dougen a rea guiskamant al leanezed a zo e trede Urz sant Fransez.

Koletta a oue pevar bloaz er gamprik-se; iun a rea aliez divar bara ha dour, meur a zevez zoken ne reseve ken magadurez nemet korf Hor Zalver er gommunion. He guele a oa eun dornad keuneud seac'h; dindan he dillad all e touge atao eur c'houriz reun, stardet en dro d'ezhi gant eur jaden houarn. Ar zantez-man a zonje aliez e Pasion hag e maro Jesus var ar groaz; ha Doue, abalamour m'oa mad da bedi, a ziskouezaz d'ezhi meur a dro an eneou o koueza e tan an ifern ker stank ha ma kouez an ere'h var an douar, en deveziou goanv. Neuze Koletta a bede startoc'h, birvidikoc'h c'hoaz; rustoc'h, spoutusoc'h e veze he finijennou evit silvidigez ar bec'herien.

Daoust ma rene ar zantez eur vuez ker pinijennuz, ken distag euz traou ar bed, ker pur; daoust ma reseve sklerijen ha nerz, o veva ken tost da Jesus e sakramant he garantez, Koletta a zonje d'ezhi e oa eur bec'herez vraz: humbl e choumaz atao. Pa veze great hano dirazi euz eun torfed benag, e veze klevet o lavaret: « Allaz! » petra eo an dra-ze e skoaz va fee'hejou d'in-me? » offanset em euz an Aotrou Doue muioc'h eget n'o » deuz great ar bec'herien vrasa. »

An Urz leanezed savet gant santez Klara en amzer sant Fransez, a oa eat var fallât a nebeudou: ar vestrezed o doa chenchent pe zoupleat ar reolen var meur a dra. Santez Koletta a oue kemennet d'ezhi gant Doue

ober d'al leanezed heuil ar reolen evel er penn kenta. Ar zantez ne zentaz ket dioc'htu, met pa anavezaz sklear bolontez an Aotrou Doue, na varc'hataz mui. Mont a reaz en Urz Santez Klara, ha miret a reaz penna-da-benn ar reolen genta, ar reolen goz. Merc'hed iaouank, poulzet gant ar Spered Santel, a c'houlennaz beza renet ganti evit gellout heuil he skoueriou, hag abenn eun nebeut bloaveziou, Urz leanezed santez Klara a oue nevezet.

Ar zantez e devoue kalz da c'houzanv evit kas he labour da benn, met treac'h e oue, gant gras Doue. Var he aliou ha gant he zikour d'ezhi, an Urziou menec'h a oue nevezet ive, ha bugale sant Fransez a heuliaz adarre, evel a goz, reolen paour Assis.

Erfin, skuizet ha dinerzet gant he labourou braz, santez Koletta a rentaz he ene kaer d'he C'hrouer, d'ar 6 a viz meurs 1447.

SONJOMP ERVAD :

En amzer m'edo c'hoaz plac'h iaouank, ar zantez-man e deuz lakeat he foan evit gellout koll he gened. Ha kaout a rafet hirio kalz merc'hed iaouank da heuil anezi? Na gredan ket. Ped ha ped all a goll ho amzer oc'h en em ficha, oc'h en em gempen, o klask en em lakât koant! N'eo ket evit Doue e poaniont, evit an dud eo; offansi a reont avechou an Aotrou Doue.

Ententit mad: kaera guiskamant a c'hell kaout eur verc'h kristen a zo ar vodesti. Eur guiskamant seiz pe vezer a zislivo, ar gened a dremeno; ar vertuz hebken a bado... mar karer; a bado hed an amzer hag hed an eternite.



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Paol, Kenta Eskop Leon

Sant Paol, leshanvet Aurelian dioc'h hano he dad Aurelius, a oa ganet e Bro-Zaoz. He gerent, tud a feiz krenv, hen lakeaz er skol gant eun den santel, hanvet Ildud, diskibl he-unan da Sant Jermen Auxerr. Er skolze, Paol a zeuaz buan da veza desket var skianchou ar bed, ha dreist holl var ar skianchou sakr. He vestr he-unan a joume souezet o velet he vouisiegez hag he zantelez. Sonjal a rea p'her guele ken devot: « Eur zant » e vezo. »

Pa oue krog en he bemzek vloaz, Paol a ieaz, gant daouzek all, da ren eur vuez a binijen pell diouz trouz ar bed. A benn eun nebeud bloaveziou tremenet o teski mad guirioneziou ar feiz hag o pedi a vir galoun, an trizek den santel a oue beleget. Divar neuze, e rejont c'hoaz muioc'h a binijen.

Eun eal a ziskleriaz dizale d'ar zant e oa galvet gant Doue da zont da brezeg ar feiz e Breiz, ha kerkent e reaz hent evit dont en hor bro. Eur c'hoar d'ezan, leanez en eur gouent var ribl ar mor, a oa var he hent: mont a reaz d'he gulet. Ar mor a rea kalz drouk e douarou ar gouent pa veze reversi braz, met ar zant a zifennaz outhan golo hiviziken parkeier ar gouent, hag ar mor a zentaz. Da c'houde, ar zant a zavaz en eur vag gant he vene'h.

En enez Eusa e chomaz eur pennad amzer, evit gounid d'ar guir Doue an dud a oa o chom eno, rag d'ar mare-ze e oa kalz tud en enezen ha n'o doa ket resevet ar vadiziant: beva a reant evel paianed. Gant he zaouzek manac'h, sant Paol en em lakeaz da zeski d'ezo ar guirioneziou brasa euz ar feiz hag ar mysteriou kenta

euz ar religion: dre he brezegennou nerzuz, ha dreist-oll, dre ar burzudou stank a rea, e lakeaz anezo da drei kein d'ho buez ha d'ho giziou paian, ha da heuil ar religion gristen, goude beza ho badezet.

Eur vech ma oue chenchet an dud en enez Eusa, ar zant a c'houlennaz digant Doue ha choum a dlie c'hoaz eno; pedi a reaz evit anaout he volonteaz. Eun eal a lavaraz d'ezan dre he gousk: « Sav, pign en da vag, ha » kea d'an douar braz. »

Paol a zentaz, hag a zouaraz gant he dud e Pors-Paol, etre Lambaol ha Plouarzel. Mont a reaz betek al leac'h m'ema breman Lamber, eno e choumaz eur pennad amzer. Ac'hano ez eaz da Lambaol-Guitalmoze, eno e savaz eur gouent all; da c'houde e skoaz dre Dreglonou, Pont-Grac'h, ar Grouanek ha Ploueskot varzu Kastell, en eur ober burzudou braz e kement leac'h ma tremene.

Kastell a oa neuze eur gear grenv, difennet gant mogeriou; paianed eo a oa enni. Sant Paol a gelennaz an dud keiz-se, reseo a reaz dre vurzud ar c'hloc'h bian hanvet an hir glaz a veler c'hoaz hirio en iliz veur Kastell, stolia ha taoler a reaz er mor ar zerpant braz a zistruje tud enez Vaz. Sevel a reaz da c'houde eur gouent kaer eno, hag ar vrud euz he zantelez hag euz he viraklou a oue skuillet heb dale dre ar vro a bez. An dud a c'houlennaz anezan da eskop, met ar zant ne felle ket d'ezan kemeret eur garg ker pouner var he ziouskoaz.

Neuze, Childebert, roue Frans, a ziskleriaz d'ezan e tlie senti ha digemeret ar garg-se, evit brasa mad ar vro, ha Judual, roue Breiz a roaz d'ezan dioc'htu a leve kear Leon, da lavaret eo Kastell, evit diazeza he eskopti. Ar zant a blegaz erfin, hag a oue sakret eskop.

Pa oue lakeat e penn he eskopti, sant Paol a oue, evel araok, eur skouer evit an oll, dre he aked da brezeg ar feiz, ha dre zantelez he vuez.

Goude beza gouarnet Iliz Leon epad pell amzer, e roaz an dilez euz he garg, hag ec'h en em dennaz e kouent Enez-Vaz evit tremen an nemorant euz he vuez; eno e varvaz leun a beoc'h, d'an 12 a viz meurs euz ar bloaz 594. Koz braz e oa.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz labourat evit silvidigez an eneo heb damanti na d'he boan na d'he skuisder, hag en deuz, en doare-ze, sikouret kalz tud da vont d'ar Baradoz.

Ni zo ive var an douar o labourat evit Doue, hag a dle poania, peb hini hervez he stad, da zikour hon nesa d'en em zavetei: n'euz netra hag a rafe muioc'h a blijadur da Zoue, p'e guir he-unan eo diskennet euz an env evit silvidigez an eneo. Mar guelit eto ho preur kouezet er pec'hed, hag e riskl da vont d'an ifern, astennit d'ezhan ho tourn evit he zikour.



AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Gregor, Pab

(540-604)



Ar zant-man, ganet e Roum, er bloaz 540, euz a dud pinvidik ha kristen, a oue savet mad gant he vam, santez Silvia. Deski a reaz en he iaouankiz kement tra a c'hellet da anaout en amzer-ze; d'he bevar bloaz ha tregont an impalaer he lakeaz da vestr var kear Roum a bez. Ar zant a e'houarnaz kear epad bloaz, met he galoun a oa distag krenn euz an henoriou, ha dizale e lavaraz kenavezo d'ar bed, evit beza manac'h en unan euz ar seiz kouent a oa bet savet gant he arc'hant.

Gregor a oue eur skouer evit he holl Vreudeur, hanvet e oue buan Tad abad ganto.

Epad ma oa ar zant e penn he abati, e tigouezaz ar maro d'eur manac'h hag a oue kavet tri bez aour varnan, pa 'z ejot d'he liena. Ar venec'h a oue mantret o

velet e oa eat ho breur enep ar baourentez en doa gullet da Zoue. An abad santel a lavaraz: « Gant aon na » zeufe eur manac'h benag all da gemeret skouer diou- » tan, lakit he arc'hant gantan en douar. » Sentet e oue ouz an urz-se.

Eun nebeut amzer goude, ar Pab Pelaj o veza deut da vervel, Gregor a oue choazet da ren an Iliz. Kerkent ha ma klevaz ar c'helou-ze, ar zant a redaz da guzat en eur c'hoat; aon en doa rak an henoriou. Kavet e oue, hag hanvet e oue Pab, e miz guengolo 590.

Diez eo rei da entent pegement a vad en deuz great ar Pab braz-man e kear Roum, hag en oll bed kristen. Great en doa eur roll euz oll beorien kear, hag e roe bara d'ezo, dioc'h m'o deze ezom. O veza klevet lavaret eun deiz, e oa maro eur paour e Roum, e oue ker glac'haret he galoun, ma iunaz epad tri devez dioc'htu, gant aon na vije maro ar paour-ze gant an dienez, dre he faot.

Kement a zoursi en doa gant an oll broiou ha m'en doa gant kear Roum; he vadelez a oa anavezet e peb leac'h. Dougen a reaz lezennou leun a furnez evit renka ar c'han, rak lavaret a rea: « Ar gristenien a vez aketuz » da zont d'an iliz, pa vez brao ar c'han, pa vez urz el » lidou sakr. »

Gant an oll draou-ze, ar Pab santel a gavaz c'hoaz amzer da ober levriou kaer ha gouizieg, evit merka ho deveriou d'ar re a zo karget da ren an eneou, ha diskleria ar skoueriou mad roet gant an dud santela. Ar zant-man en doa eur spered lemm hag eun deskadurez vraz; en despet d'an tregas an doa o ren an Iliz, he ene a joume e peoc'h; evelato, da zonzal ober kement a draou, e tilie beza bet sklerijennet gant Doue, hag he vignoun, an avieler Per, a lavar en deuz gullet aliez ar Spered-Santel, dindan furn eur goulm, azioc'h he benn epad ma skrive.

Goude beza renet an Iliz epad trizek vloaz, c'houec'h miz ha dek devez, ar zant braz-man a 'z eaz da reseo en env kurunen an doktored, er bloaz 604.

KENTELIOU SANT GREGOR

I. — An neb a lenv d'he bec'hejou, hag a gouez buan er pec'hed da c'houde, a ra an neuz d'ober piniñ, pe marteze ne c'hoar ket e pe zoare e tleer enebi ouz ar pec'hed.

II. — Ar guir garantez a ra d'an den karet he vignoun e Doue, ha karet he enebour abalamour da Zoue.

III. — An neb en deuz karantez Doue en he galoun, a boagn da labourat evit brasa gloar Doue; an neb ne ra netra evitan n'en deuz ket eur guir garantez.

IV. — Ne dleer ket nemeur a veuleudi d'an neb a ra vad d'he vignouned, met meuli a dleer kals an neb a ra vad d'he enebourien.

V. — Doue a fell d'ezan beza pedet aliez; bez' ez euz grasou hag a ro, evel pa lavarfen, en despet d'ezan.

SONJOMP ERVAD :

En despet d'an oll dregas en doa evit ren an Iliz en he fez, en eun amzer a rouestl hag a drubiull, sant Gregor ne golle ket peoc'h he ene. Sonjal a rea en he zilvidigez, n'eo ket hebken epad ma pede, met c'hoaz epad ma skrive, hag epad ma roe he urziou evit ren an oll gristenien. Ha c'houi, daoust ha sonjal a rit avechou en Aotrou Doue, epad ho labour?

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Santez Bathild, Rouanez

Merc'h da Roue Bro-Zaoz, Bathild a oue paket, pa oa iaouank c'hoaz, gant laeroun-vor, ha guerezet d'eun ofiser euz ar Frans, Erchinoald. Heman a veve e lez ar roue Clovis II, hag a reaz d'he sklavoerez nevez ober labourou dister en he di. Bathild a oa koant evel an deiz.

Greg Erchinoald a varvaz, ha kerkent an ofiser a c'hoanteaz kaout he sklavoerez da bried, met hi a respontaz: « Me a zo da Jesus-Christ, sonj am euz beza d'ezhan ha d'ezhan hebken, » ha gant aon rak he mestr, e tec'haz betek ma reaz Erchinoald eun eil dimezi. Neuze, e tistroaz adarre en he di.

Ar roue Clovis, o veza guelet Bathild, he goulennaz ive da bried. Ar plac'h santel en em roaz adarre d'ar beden, ha pa oue sklerijennet gant Doue da rei he asant, e lavaraz ia d'ar roue. An eured a oue euz ar re gaera.

Evithi da veza rouanez, Bathild na zilezaz nag he fedennou, nag he deveriou e kenver Doue. Sikour a reaz he fried da veza leal ha mad evit he zujidi, met ar roue a varvaz iaouank. Ar pennou braz a lakeaz neuze Bathild e penn ar rouantelez, betek ma vije savet bras he bugale, hag hi a asantaz gantho.

Diou euz al lezennou a oue douget, dre he urz, a verk d'eomp peger fur ha peger kristen e oa ar rouanez. Difen a reaz guerza d'an estren, evit beza sklavoerien, hini ebed euz bugale ar rouantelez, setu ma oue torret ar c'hiz fall a oa bet heulet, betek an amzer-ze.

Difen a reaz ive sevel an taillou a veze lakeat dre benn, var an oll, bras ha bian, betek neuze. An taillouze a rea da veur a hini choum heb dimezi, ha d'an dud dimezet choum dizher pe da viana kaout nebeud a vugale, pa 'z eo guir an taillou a greske atao gant niver an dud en ti.

Abalamour d'al lezennou-ze, ha da galz traou ker fur all, ar rouanez Bathild a oue benniget gant ar bobl. Sikour a reaz an ilizou hag ar c'houchou. Pa oue savet he zri mab bras aoualc'h, e roaz eur rouantelez da bep bini anezho, hag ez eaz da leanez en eur gouent savet ganthi, e Chell, tost da Paris.

He brasa plijadur a oa servicha al leanezed all: lod a oa souezet o velet eur brinsez ker braz oc'h en em izelât kement-se, met hi a lavare d'ezo neuze: « Pa » zonjan en deuz Jesus-Christ servichet he ebestel, ha » goalc'het d'ezo ho zreid, n'ouzoum ket petra d'ober » evit en em izelât aoualc'h. »

En he c'hlenved diveza e tiskouezaz ive eur basianted vraz; choum a reaz pell amzer da c'houzanv evel eur verzerez, ha goulskoude na oue klevet biskoaz o laoskel an distera klemmaden. Lavaret a rea aliez ar c'homzouman: « Me ho trugareka, va Zalver, pa roit d'in-me, ho » servicherez dister, ar c'hras da c'houzanv kement. »

Goude beza resevet he zakramanhou diveza gant eur feiz birvidik, e varvaz en eur starda he c'hrusifi var he muzellou, hag en eur ginnig he foan da Zoue (680).

SONJOMP ERVAD :

Ar stad a zonzj d'eomp a zo ar zantela, n'eo ket atao an hini m'omp galvet ennan gant Doue. Ma vije choumet Bathild heb dimezi, n'e devije ket great kement a vad en he buez, evel m'e deuz great breman; ha marteze zoken n'e vije ket en em zanteleat kement he-unan.

Abarz kemeret eur stad a vuez, e tleomp goulven kuzul digant Doue dre ar beden, ha digant hon tad kovesour, abalamour m'eo karget gant Doue da henchha ac'hanomp epad ar vuez-man.

Santez Bathild a gave guelloc'h choum guerc'hez, ma vije bet holontez Doue, eget dont da veza Rouanez Frans; c'houi ive karit ar burete; n'en em lakit ket e stad ar briedelez, araok beza pedet Doue pell amzer d'ho sklerijenna. Bezit prest atao d'ober he volontez, hag e roio d'eoc'h ar grasou m'o peuz ezoum anezo evit en em blijout en ho stad, hag ober ho silvidigez ennan.

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Lonjin, Merzer

Sant Lonjin eo ar zoudard a zigoraz, var a leverer, kostez Hor Zalver gant eun taol lans pa oue krusifiet var menez Kalvar. Test eo bet euz maro Jesus var ar groaz, hag o velet ar burzudou a c'hoarvezaz neuze, ec'h en em zantaz hanter-c'hounezet d'ezhan.

Doue a roaz d'ezhan c'hoaz ar c'hras da veza test euz resurreksion Hor Zalver, rak hen eo a oa kabiten ar zoudardet lakeat da ziuall ar bez da vener ar Groaz ha d'ar zadorn zantel; ha pa velaz e oa savet Jesus euz ar bez leun a vuez, ne joumaz mui da vare'hata: en em rei a reaz korf hag ene d'an Doue gallouduz-se, ha diskleria a reaz dioc'htu ar burzudou en doa guelet.

Kemeret a reaz daou euz he zoudardet evit mont d'ar C'happados da lakât sklerijen gaer ar feiz da bara var ar vro-ze: komz a rea gant kement nerz euz Pasion ha Resurreksion Mab Doue, ma rea mez d'ar Juzevien o doa he staget ouz ar groaz. Gant an drouk a oa emmo, ez ejont d'hen diskuill da Bilat, ha dioc'h-tu e oue kaset archerien d'he glask, gant urz zoken d'hen lakât d'ar maro.

Ar zant, pa glevaz lavaret edot ouz he c'houlven e kear, ne glaskaz ket en em guzat; mont a reaz zoken da gaout an archerien, heb en em rei da anaout d'ezo. Komz a reaz outo braoa ma c'hellaz, ho fedi a reaz zoken da zont en he di da ziskuiza; kinnig a rea d'ezo ar pez a c'helje ober vad d'ezo, ha goudeze e lavaraz: « Va » mignouned, gouzout a ran e maoc'h e kear, euz a berz » Pons-Pilat, karget da gregi e Lonjin ha zoken d'hen » lakât d'ar maro; ma! setu hen ama; me va-unan eo » Lonjin; krogit ennon heb aon ebet, ha grit d'in mervel pa geroc'h. » — « Doue ra viro, a respountaz an » archerien: « goude beza hon digemeret ker brao, » n'oump ket evit beza ker kriz-se en ho kenver, anaout » degez-vad eo a dleomp d'eoc'h, ha ne garfemp ket » ober d'eoc'h an distera displijadur. » ... « Displijadur » ebet, eme Lonjin, ar c'hontrol eo, ar maro a zigoro » d'in dor ar guir eürusdet, ne c'hell beza evidon netra » kaeroc'h eget m'eo skuill va goad evit renta testeni » euz ar burzudou kaer am euz guelet dre c'hras Doue. »

O veza lavaret kement-se, evit diskuez peger laouen e oa da vervel, e kemeraz eur viskamant ven hag ec'h en em lakeaz etre daouarn an archerien. Ar re-man, goude beza argilet choaz, a zibennaz ar merzer kalounek.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, goude beza digoret kostez Jesus gant eun taol lans, a zantaz he galoun gounezet, hag a felle d'ezan mervel dre garantez evit an Doue-ze ker mad en he genver. C'houi ive, mar doc'h poaniet pe melkoniet, ma na gavit den d'ho konsoli, en em dennit a spered e kostez Hor Zalver, hag eno c'houi a zanto ho kaloun o tomma gant tan he garantez, eno c'houi a gavo nerz ha konsolasion. Livirit d'ezan ho poaniou evel d'eur mignoun, selaouit anezan hag e lavaro d'eoc'h ive ar boan en deuz o velet an dud o taoler kement a zismegans varnan.

Marteze oc'h spountet o velet niver ho pec'hejou, met na fallgalounit ket. Lakit ho fizians e Jesus hag e klevoc'h anezan o lavaret d'eoc'h: « Ene paour, daoust ha me a c'hell » kaout c'hoant d'az daoni goude beza gouzanvet ar maro » evit da zavetei! Na velez ket va divreac'h digor d'az briata, » ha va c'haloun digor d'az reseo? »

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Gregor, Ermit

Ganet en Armeni, ar zant man a oue savet mad, rak he dud a oa kristenien stard ha pinvidik.

Iaouank e oa c'hoaz, pa gollaz he dud, met e leac'h choum en he vro, evit kaout danvez hag henoriou, ar zant a reaz he zonz da dec'het kuit. Guerza a reaz eta kement tra en doa var he hano, ranna a reaz an oll arc'hant en doa etre an dud paour hag ezomek, ha tec'het a reaz evit mont da veva en eur plas distro, he-unan gant Doue.

Pa oue eat pell euz ar gear, e kavaz eur gouent var he hent: eno e choumaz. Treac'h e oue buan d'an oll venec'h all dre he binijennou, hag he aked da bedi: kaera devosion en doa a oa he garantez evit Hor Zalver

Jesus-Christ er Zakramant meulet ra vezo. En em glevet a reaz gant ar re a brenne dorjou an iliz bemdez dioc'h ar pardaez, hag e tremene aliez an noz penn da benn oc'h adori ar Zakramant; he zaoulin var leur an iliz, e stoue he benn betek ar pave kant guech bemnoz, en eur c'houlouen trugarez an Aotrou Doue evitan hag evit an oll bec'herien.

Aotrou 'n Eskop ar vro a glevaz hano euz he vuez pinijennuz hag euz he zeskadurez, hag a reaz d'ezan he zikour da c'houarn an eskopti. Goude beza bet beleget, ar manac'h santel a ieaz da brezeg d'an dud var urz he eskop, ha dizale e oue anavezet ha karet gant ar peb brasa euz tud an eskopti-ze, hanvet Nicopolis.

Pa varvaz an eskop, an dud a Iliz hag ar bobl a roaz oll ho mouez da C'hregor evit ren an eskopti. Senti a reaz. Sakret e oue eskop, hag e poaniaz da gelen ha da gennerza an dud a oa fiziet ennan. Mad e oa da bedi ha da c'houlouen sikour an Aotrou Doue, rei a reaz aluzennou braz d'ar beorien, sikour a reaz ar re glanv, meur a vech memez e roaz d'ezo dre vuzud ar pare, ker braz e oa he c'halloud dirak Doue; en eur ger, ober a reaz kement tra a zo karg eun eskop, ha Doue a skuille he vennoz var he labour.

Met an eskop santel a oa nec'het he spered. Respount a reaz dirak Doue, euz eneo oll dud eskopti Nicopolis, hag e sonje e veze offanset kalz an Aotrou Doue bemdez gant meur a hini; tregas en doa gant ar c'hudennou en doa da zirouestla; hag en doa keuz d'an amzer ma oa manac'h ha netra ken. Lavaret a reaz en he galoun: « Eun ermit, eur manac'h a zo easoc'h d'ezo gounit ar » baradoz. »

Goude beza choumet pell da ruill ar zonz-se en he spered, an eskop santel a dec'haz kuit euz he eskopti, ha gant aon da veza kavet gant he dud, e treuzaz ar mor Mediterraneane, hag e touaraz en Itali; ac'hano e teuzaz doun er Frans, betek eskopti Orleans. En eur c'horn euz an eskopti-ze, e savaz eul lochennik, eno e vevaz he-unan gant Doue.

Debri a reaz eur pred hebken da veurz ha da iaou, met

en deveziou all euz ar zizum ne zebre morse eur vruzunen, da zul hebken e tebre daou bred, ha c'hoaz, ne zebre nemet eur vozad boued bep pred a rea. Gant truez outan, an dud divar dro a zigase bevans d'ezan evit miret na varvje gant an naoun, met e leac'h dibri ar boued-se, her ranne etre ar beorien.

Ren a reaz ar vuez kalet ha piniennuz-se epad seiz vloaz, ha den na c'hell lavaret ar vad a reaz er vro, ken dre skouer he vuez, ken dre he genteliou leun a furnez. Doue a ziskleriaz d'ezan pe da zeiz e varvje, reseo a reaz gant ar brasa devosion he zakramanchou diveza, ha da c'houde e tremenaz sioul, d'ar 16 a viz meurz, prestik goude ar bloavezh 1000.

Ar miraklou braz a c'hoarvezaz var he vez a ziskleriaz he zantelezh d'an oll.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant braz-man en deuz bet sonj atao euz ar maro, euz ar varn, euz he ene da zavetei; abalamour da ze en deuz tec'het arak an henoriou, ha karet ar vuez kuzet. Ha c'houi, daoust ha na glaskit ket re beza meulet, daoust ha na boagnit ket re da veza savet dreist ar re all?

AR ZEITEZVED DEVEK A VIZ MEURS

Sant Patrik, Eskop

Ar zant-man, hanvet abostol an Irland, a zeuaz er bed en eun ti d'he dad, e parrez Boulogn-var-Vor, er Frans. He vam, karez da zant Martin, eskop Tours, a roaz d'ezan eur gelennadurez kristen, hag a zavaz anezan e doujans Doue. Ar bugel a oa devot braz.

P'en doa Patrik c'houezek vloaz, eur vanden bleizimor a zaillaz var ar vro, hag a gasaz ganto tud a vagadon. Patrik a oue paket gant ar re all, kaset d'an Irland

ha guerzet eno. He vestr hel lakeaz da zionall al loened; setu aze micher Patrik epad c'houec'h vloaz. An den iaouank a blije d'ezan ar beden; mont a rea d'an daoulin kant guech en deiz ha kant guech en noz evit adori Doue. Na baouez ket, memez pa veze ar goanv en he voasa; en despet d'an ere'h, d'ar glao, e taouline d'an douar, savet he zaoulagad gant karantez ha levenez etrezek an env, unanet a galoun gant an Aotrou Doue. Abenn c'houec'h vloaz e c'hellaz kuitat an Irland evit distrei d'he vro. Diou vech all c'hoaz e oue paket ha guerzet, met prenet e oue bevech gant he genvroiz, hag e teuzaz ganto d'ar gear.

Neuze ec'h en em roaz da zeski skianchou ar relijion. Dont a reaz da ober he studi epad pevar bloaz, da gouent he eontr sant Martin e Tours. Tri bloaz all e choumaz gant sant Jermen eskop Auxerr, ha nao bloaz en abati Lerins. Eno e resevaz sakramant an Urz: he galoun a verve gant ar c'hoant da vont d'an Irland evit prezeg an Aviel. Sonjal a rea d'ezan aliez, dre he gousk, klevet mouez an Irlanted o c'hervel anezan da zistrei adarre en ho zouez, guelef a rea ho divreac'h astennet varzu ennan, evit he bedi da zont da brezeg d'ezo al lezen gristen. Sant Jermen o veza eat da Roum, Patrik a heuliaz anezan, hag a gomzaz d'ar Pab sant Selestin euz ar c'hoant en doa da sklerijenna an Irlanted. Ar Pab a asantaz gantan, hag a hanvaz anezan eskop var an Irland.

Kerkent ar misioner a dreuzaz ar mor gant eun nebeut beleien, evit mont da zavetei an eneoù keiz-se, er bloaz 432.

Pa zouaraz en enezen, e klevas lavaret e oa ar vistri hag ar pennou braz dastumet oll assamblez, evit en em glevet divar benn ar vro. Patrik a ieaz betek enno, hag en em lakeaz kerkent da ober d'ezo eur brezegen. A veac'h m'en doa achuet da gomz, ma velaz eun nebeut mad euz an dud gounezet gantan, o c'houlen beza badezet.

Epad tregont vloaz e labouraz heb ehana, ha dre he brezegenmou, he zantelezh ha sikour grasou Doue e chenchaz doare d'ar vro, oc'h ober kristenien ha sent euz an

dud-se douget araok da bep fallagriez: ar vuez oristen a oue heuliet ker kaer ha ker mad gant an oll eno, ma teuaz an Irland da veza hanvet enezen ar zent.

E guirionez, ilizou, kouenchou a oue gueleit o sevel dre ar vro stank stank, evel dre vuzud. Patrik a e'hounezaz ive d'ar feiz barzed ar vro. Neuze avad e oue klevet, dre gouenchou an Irland, kantikou ker flour ha ken dous, ma tave an elez ho c'hanaouennou dudiuz, hervez lavar eur skrivanié koz, evit dont d'ho zelaou, divar dreujou ar baradoz. Burzuduz e oa gueleit an dud o tiredet oll da e'houlén ar vadiziant, ha da zeski ar relijion gristen a brezege ar zant.

Evitan na golle morse ar zonz euz he Zoue, he bedi a rea noz-deiz, evel guechall, heb ehana. Erfin, d'an oad a zaouzek vloaz ha pevar ugent, e rentaz he ene d'he Grouer, var dro ar bloaz 462: lavaret a reer en deuz, en he vuez, sakret tri e'hant hanter kant eskop.

SONJOMP ERVAD :

Sant Patrik e bede Doue kant guech en deiz ha kant guech en noz. Red eo pedi Doue, ha red eo hen ober aliez bemdez, rak ezom on euz bepred euz he c'hrasou, euz he vadou, euz he zikour. Pedomp Doue dioc'h ar mintin evit he zaludi evel hor mestr, goulén digantan he vennoz. Bep er mare, e doug an deiz, savomp hor c'haloun varzu Doue evit skanvat hon labour, ha delc'her sonj euz an env. Lakeomp sin ar groaz var hon tal araok ha goude ar pred, rak euz dourn Doue eo e teu d'eomp ar bevanz. Pedomp dioc'h an noz, evit goulén pardoun euz ar pec'hejou great epad an deiz, hag evit trugarekât Doue euz ar grasou, ar madeleziou hon euz resevet.

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Syrill, Eskop Jerusalem

An doktor braz-man a zo bet ganet e Jerusalem, var dro ar bloaz 315. Studia a reaz ar Skritur zantel gant kement a aked ma ouie ar peb brasa anezi dindan envor.

Lenn a reaz ive skridou an doktored paian evit gellout ho dislavaret.

Beleget e oue d'an oad a dregont vloaz, hag e roaz da bobl Jerusalem kenteliou ker kaer ha ker sklear, ma oue hanvet da eskop gant an oll, rak en amzer-ze, an eskob a veze choazet gant an dud a iliz hag ar bobl. Syrill ne oa e'hoaz nemet pemp bloaz ha tregont.

Prest goude ma oue hanvet eskop, e tigouezaz eur burzud kaer e Jerusalem. Eur groaz sklerijen a oue gueleit o para skeduz en oabl var dro nao heur, mont a rea euz a Venez Kalvar betek ar Menez Olived, ha chom a reaz a vel d'an oll betek goude kresdeiz. Ar burzud-se, a zo hano anezan e levriou ar baianed ho-unan, a starteaz ar gristenien en ho feiz, hag a reaz da veur a baian goulén ar vadiziant.

Epad ma poanie ar zant da gelen tud Jerusalem, ha da ziarben an dizursiou, an drouk-spered a glaskaz freuza he labour. Tud aviuz hen tamallaz da veza guerezet ar guiskamanchou sakr. Guir e oa kement-se: epad eur gernez vraz, ar zant, dre druez ouz an dud a varve gant an naoun, en doa guerezet lod euz ar guiskamanchou oferen evit gellout maga an dud ezomek. An Arianed, eur rum heretiked anavezet mad en amzer-ze, a ziskleriaz e oa kement-se eur pec'hed braz, hag a reaz koundaoni an eskop santel d'an harlu, da lavaret eo, da vont er meaz euz ar vro.

Kuitât a rankaz eta Jerusalem, hag an heretiked a dridaz ho e'haloun gant al levenez: ar zant a oa var ho hent abalamour mac'h enebe outo, abalamour ma tisklerie re vad ar virionez. An eskibien ne oant ket a du gant an Arianed, a skrivaz d'ar Pap Damas evit meuli ho breur Syrill, en doa kalz poaniou da e'houzanv evit Jesus-Christ hag ar guir feiz.

Pa zavaz Julian var dron impalaered Konstantinopl, ar zant a e'hellaz distrei da Jerusalem. Ar peoc'h ne badaz ket pell. Julian en doa nac'het he feiz, ha e'hoant en doa da lakât ar re all d'ober evel dan. O klask dont a benn euz he daol, e kemennaz d'ar Juzevien sevel a nevez templ Jerusalem. Lavaret a rea Julian: « Jesus

» en deuz diskleriet ne jounfe ket mean var vean euz
» an templ; ma vez eta savet a nevez, Jesus a vezo
» lakeat gaouiad. »

Laouen braz, ar Jusevien a zentaz. Dont a rejont da
Jerusalem euz ar broiou pella; ar bikerien vein a stagaz
d'al labour, ar vansounerien a oue galvet. An eskop
santel a bede.

En devez m'edot o tiazaza ar vein kenta euz an templ
nevez, setu padal flammou tan o tilemmel euz an douar
var an artizaned: ar re-man a rankaz tec'het, hanter-
zevet. Klevet e oue, er memez amzer, ar gurun o krozal;
an douar a grenaz, ha kroaziou tan a oue merket var
gorfou ha dillad ar re a oa eno. Ar Juzevien, gant ho
c'hounnar, a gredaz distrei meur a vech d'al labour,
diarbennet e ouent bep taol gant an tan.

Red mad e oue da Julian ha d'ar Juzevien dilezel al
labour.

Sant Syrill a drugarekeaz Doue euz a greiz he galoun,
hag a boaniaz da sklerijenna an dud digristen o doa
gullet ar burzud-se. He brezegennou a bade eun heur.

Doue her galvaz davetan er bloaz 386; abalamour
m'en deuz stourmet kalz eneb an heretiked, eo bet
lakeat gant an Iliz e renk an doktored.

SONJOMP ERVAD :

Prezegennou ar zant-man a bade eun heur, ha kristenien
an amzer-ze a joume d'he zelaou. Pegen dishenvel eo an dud
hirio! Ne garer ket chom da zelaou eur brezegen, pa bad
en tu all d'eur c'hart heur, ha setu perak ar relijion n'eo mui
anavezet. Hag ar re na garont ket selaou eur brezegen en
Iliz, na garont ket beza kenteliet er gear; lenn a raint levriou
goullou ha difoun, avechou zoken kazetennou digristen, kaze-
tennou brein, penaoz e choumfe beo ho feiz? Korf an den
a vez maget gant bara, he ene a vez sklerijennet gant ar
c'henteliou santel, maget ha krenveat gant gras an aotrou
Doue.



AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Joseph, Pried ar Verc'hez



Sant Joseph a oa euz a lignez ar rouaned santel o doa
renet Israel gant kement a honor: David, Salomon,
Ezechias; euz a lignez ar batriarched o deuz rentet gloar

da Zoue en ho buez: Abraham, Isaac, Jacob; met an honor-ze a zo nebeut a dra ma sonjer eo sant Joseph, pried ar Ver'hez Vari. An Doue en deuz roet grasou ken dispar d'ar Ver'hez, abalamour me tlie beza mam d'an eil Ferson euz an Drinded en em c'hreat den, en deuz roet ive, d'an hini a dlle beza he fried, grasou euz ar re gaera.

Ganet paour, sant Joseph a zeskaz ar vicher a galvez evit gellout gounit he vara. En he vugaleach hag en he iaouankiz, e oue skouer ar baotred all, met kaera vertuz a velet ennan a oue evelato ar burete: modest e oa evel eun eal.

An oll Juzevien a zimeze, met Joseph, poulzet gant ar Spered-Santel, a reaz veu da jom bepred guere'h; ar Ver'hez Vari, e doa ive guestlet he guere'hded da Zoue, a asantaz, abalamour da-ze, he gemeret da bried, rak gouzout a rea ne vije biken eat Joseph eneb ar ger o doa roet d'an Oll-C'halloudeg.

Nebeut amzer goude ma ouent eureujet, an arc'heal Gabriel en em ziskouezaz d'ar Ver'hez en he zi e Nazareth, hag a ziskleriaz d'ez i e oa choazet da veza mam d'ar Messiaz ma oa pobl Israel var c'hed anezan abaoue keit all a amzer, mam da Vab Doue en em c'hreat den.

Mari, humbl atao, ne ziskleriaz ket d'he fried myster an Inkarnasion; eun nebeud miziou goude, eun eal en em ziskouezaz eta dirak ar zant, hag a lavaraz d'ezan: « Joseph, mab David, n'o pezet aon ebet o chom gant » Mari. Lakât a raio er bed eur mab hag a vezo hanvet » Jesus: hen eo a voalc'ho pec'hejou an dud; mab » Doue eo. »

Ar zant braz-man en devoue an heur-vad da velet he Zalver ganet e kraou Bethleem, he adori a reaz; guelec a reaz ive ar bastored ha tri roue euz ar Zao-Heol o tont d'he adori d'ho zro. Prestik goude, eun eal a zihunaz Joseph e kreiz an noz; « Savit, kemerit ar c'hrouadur » hag he vam, ha tec'hit ganto d'an Ejipt, rak ar roue » Herodes a glask ar c'hrouadur evit he lakât d'ar » maro. »

Sant Joseph ne c'hrosmol ket, tec'het a ra dioc'htu.

Ar famill zantel a jomaz eun nebeut bloaveziou en Ejipt; var urz eun eal adarre, sant Joseph a zistroaz gant Jesus ha Mari da Nazareth. Nag a veritou a zastumaz eno ar zant braz-man, o veva atao gant Jesus, eien an oll c'hrasou, o teski d'ezhan labourat; o veva e kichen Mari, mam ar burete, skouer an oll vertuziou; o c'hounit d'ezo, epad tregont vloaz, divar boan he zivrec'h, ho bara pemdeziek glebiet gant he c'hoezen. An ebestel, choumet tri bloaz hebken gant Jesus, a zo savet evelato da veza sent braz, abalamour d'ar c'henteliou, d'ar grasou o deuz resevet epad an tri bloaz-se; pe seurt santelez a dle kaout sant Joseph a zo bet epad tregont vloaz gant Jesus, a zo bet doujet ha karet gant Salver ar bed, evel he dad mager. Nan, kurunen ebet n'eo, er baradoz, ker kaer hag hini sant Joseph; kurunen ebet, nemet hini mam Doue.

Sant Joseph a iea bep bloaz da Jerusalem gant ar Ver'hez Vari evit goueliou Pask. D'he zaouzek vloaz, Jezuz a iear ive ganto, met kollet e oue. Pebez rann-galoun evit Joseph ha Mari! Pebez levenez, p'her c'havjont, tri devez da c'houde, e kreiz an doktored.

An Aviel ne lavar da c'houde nemet eur ger divar benn sant Joseph: « Jesus a zistroaz da Nazareth, gan- » tan ha gant he vam; senti a rea outo. » Pebez ger kaer! Jesus a zente, Jesus an Oll-C'halloudeg, Jesus an Oll-Furnez, a zente ouz Joseph!

Kredi a reer eo maro sant Joseph e Nazareth, etre divrec'h Jesus ha Mari, araok ma 'z eaz Jesus da brezeg he Aviel dre ar Judee. Ha setu perak e vez pedet dindan an hano a batron ar maro mad.

Ar grasou kaer a ro sant Joseph d'ar re a zo devot d'ezan, a verk eo braz he c'halloud er baradoz. Santez Thereza a lavar: « Ar brasa fizians am euz bet atao e » sant Joseph, met anza a dlean en deuz ar zant braz- » man roet d'in avechou grasou en tu all d'am gou- » lennou. »

SONJOMP ERVAD :

Mar fell deomp kaout eur maro mad ha mervel etre di-vrec'h Jesus ha Mari, evel ma varvaz sant Joseph, bezomp devot d'ezan. Roet en deuz da zantez Theresa he oll goulennou, hi eo hel lavar; pedomp anezan da gaout evidomp digant Doue eur c'hras dreist oll, gras ar maro mad; evit he c'haout lavaromp aliez gant devosion an tri hano kaer: Jesus, Mari, Joseph!

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Lubin, Eskop

Ar zant-man, ganet en eun tiegez e kichen Poitiers, a dremenaz bloaveziou kenta he iaouankiz o tiouall al loened. He dud ne oant ket pinvidig, met sevel a rejont ho c'hrouadur e doujans Doue; hen, dioc'h he du, a oue atao fur ha sentuz.

Eun devez m'edo o vont da gas he zenved ha beuri, Lubin a gavaz var he hent eur manac'h. Lavaret a reaz d'ezan laouen: « Tad, c'hoant braz em befe da zeski » lenn; merkit d'in, mar plij, al lizerennou var va » gouriz, hag e teskin anezo dre ma 'z in ha ma » teuin. » Ar manac'h a reaz ar pezh a c'houlenne ar paotr, hag o veza m'en doa Lubin eur spered kaer, e teskaz lenn e berr amzer. He dad hen lakeaz neuze er skol, hag ar paotr, gant he spered digor, a zeuz da veza desket mad.

Goude beza choumet eur pennad er skol-ze, Lubin, evit kaout tro da veza gouiziekok'h, a iez d'ar gouent gant asant he dud. Eno e pedaz hag e studiaz hervez he c'halloud, rak kemeret a rea var amzer ar c'houk evit asten he studi. Dont a reaz da veza gouiziek braz. Ne lenner ket e buez ar zant-man en defe great pinijennou rust ha kalet, evel meur a hini euz ar zent brudet;

ha gouskoude, plijout a reaz kalz da Zoue, abalamour ma oue mad atao da heuil penn-da-benn reolen an Urz m'oa eat ennan. Ober a rea, guella ma c'helle, kement tra en doa da ober: setu ma teuaz Doue da ziskleria he zantelez dre veur a virakl.

Eun devez, pa oa an ed o tarevi, e savaz eur barrarne spountuz, hag an oll a vele ervad e oa ar vro varnez beza rivinet. Ar zant, gant truez ouz an dud, a gouezaz d'an daoulin; da c'houde e savaz, benniga a reaz eur banne eol, taoler a reaz an eol-ze en ear, ha ker-kent ar c'houmoul kazare'h a dec'haz, an avel a davaz.

Pa varvaz eskop Chartres, an dud a Iliz hag ar bobl a hanvaz Lubin en he leac'h. Ar zant a glaskaz, epad eun nebeud deveziou, tec'het dirak ar zamm pouner-ze, met red mad e oue d'ezan plega da c'hoant an oll.

Eur vech eskop, Lubin a boaniaz da veza santeloc'h c'hoaz eget diagent: seulvui e veze lakeat bras gant an dud, savet huel ganto, seulvui ec'h en em gave bian ha dister. Soursi en devoue euz an eneoù fiziet ennan, he zousder a reaz da galz a bec'herien ren eur vuez kristen.

Erfin, leun a veritou, goude eur c'hlenved poaniuz hag a badaz seiz vloaz, ar zant-man a rentaz he ene d'he Grouer, er bloaz 557.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar zentidigez hag an doujans en devoue ar c'hrouadur iaouank-man evit he dad hag he vam, a dennaz varnan grasou ha bennoz an Aotrou Doue epad he oll vuez: bez' en devoue ar c'hras da veza beleg hag eskop. Ar vugale sentuz, ar vugale a ra bepred ha dioc'htu bolontez ho zad hag ho mam, a zo benniget gant Doue, ho loden eürusdet o deuz var an douar, hag eur vuez hir peurliesia. Er c'hontrol, ar vugale dizuj, a zo heb ehan oc'h ober poan d'ho zud, a ra aliez eur maro fall; dougen a reont, en despet d'ezo, kroaziou ar vuez.

II. — Ar zant-man, o veza kavet eur manac'h var he hent, a c'houlennaz digantan he gentelia. Nag a bed krouadur n'o

deuz ket an distera soursi da zeski lenn ha skriva! Nag a bed a zav keuz ganto divezatoc'h, pa vez re zivezad! Tadou ha mammou, gouzout a rit pegement a vad a ra d'eun den gouzout lenn ha skriva, en hon amzer dreist-oll; roit eun nebeut deskadurez d'ho pugale. Ober a raint, easoc'h kalz, ho zreuz er vuez-man, heuil a c'hellint guelloc'h ho relijion, kaeroc'h kurunen a c'hellint, mar keront, gounit er baradoz.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Beneat, Abad

(480-543)

Ar zervicher braz-man da Zoue, a oa ginidik euz an Itali. En eur ober he studi e Roum, e tiskouezaz eur garantez tener meurbed e kenver ar Vere'hez, ha miret a reer c'hoaz eno imach an Itroun-Varia, a zo bet test euz he bedennou epad he iaouankiz. Bez' e veze bepred var aoun da goueza er pec'hed, ha pa velaz ar vuez direol a rene lod euz an dud iaouank a oa er memez skol gantan, e kavaz guelloc'h pellât diouto, evit dere'hel he galoun neat ha dinam.

D'an oad a bemzek vloaz e kuiteaz, evit mad, kear Roum, hag e klaskaz eul leac'h distro benag var ar meaz. En em gavet pell e touez meneziou huel ha gouez, eun ermit a ziskouezas d'ezhan eul leac'h sioul ha distro; eno eo e choumaz. An ermit en devoue ar vadelez da zont bep sizun epad tri bloaz, da zigas d'ezhan bara evit beva.

Beneat, ankounac'heat gant an oll, a reaz eno bep seurt pinijennou rust. En dro d'he gorf e touge eur c'houriz reun hag a zalc'haz betek ar maro, ha n'euz forz peger ien e vije an amzer, ne gouske morse nemet var ar c'halet. Al loden vrasa euz he amzer a dremene o sonjal e Doue, hag o pedi. Goulskoude mar doa dizon-

jet gant an dud, gant an diaoul n'oa ket, rak en em dennit el leac'h ma karot, hennez ho kavo atao; dont a reaz eta da glask deseo ar zant, da glask hen lakât da fallgalouni ha da guitât al leac'h-se. Digas a rea en he spered bep seurt sonjou vil ha divalo hag a rea d'ezan ruzia gant ar vez; eun deiz, evit trec'hi an ioulou fall a zante o virvi en he galoun, ar zant a ieaz d'en em ruilla, en noaz, e touez al linard, an drez hag ar spern, ken a deuaz he gorf da veza leun-c'hoad. Doue a zigollaz anezan euz he nerz kaloun, rak divar neuze, ne zantaz mui tan an ioulou fall.

Mont a reaz, da c'houde, var menez Kassin, eno e tiskaraz templ an doueu faoz, e chenchaz ar baianed e kristenienn, e savaz iliz ha kouent. Kalz tud iaouank a deuaz di d'he gaout, setu ma savaz neuze an Urz kaer en deuz roet d'an Iliz ouspenn tri mill manac'h hag a zo bet diskleriet sent.

Beneat a renaz he venec'h gant furnez ha dousder: ha Doue ne c'hortozaz ket maro he zervicher evit diskouez he zantelez: epad he vuez zoken e roaz d'ezan an donezon a viraklou. Eun devez, eun den fallakr a ginigaz d'ezan eur verennad zour, ampouezoun emmi; ar zant a reaz sin ar groaz abarz eva, ha kerkent e velaz ar veren o terri, hag an dour o ruilla d'an douar.

Ar roue Totila en doa klevet lavaret ec'h anavezze ar zant-man an amzer da zont, hag a c'hoanteaz gouzout ha guir e oa kement-se. Rei a reaz he zillad roue da uman euz he zervicherien, hag e kasaz anezan da gaout sant Beneat. Kerkent ha m'her guelaz, ar zant a lavaraz: « Va mab, kuitait buan ar guiskamant-se, ne glaskit » ket en em guzat pelloc'h, rak an dillad-se n'int ket » d'eoc'h. » Totila a joumaz souezet-marzo o klevet an dra-ze, hag a zeuaz d'en em deuler e c'harz treid ar zant; eno o choumaz ken a oue lavaret d'ezan sevel. Met souezet e oue muioc'h c'hoaz pa glevaz ar zant o komz d'ezan evelhen: « C'houi a ra kalz drouk en Itali, ha » kalz drouk a reoc'h c'hoaz epad nao bloaz, met lakit » evez: n'o peuz mui nemet nao bloaz da c'houarn ho » pobl; goudeze e rankoc'h renta kount da Zoue euz

» oc'h oll oberou »; hag ar pezh en doa diskleriet Beneat a deuz da vir penn-da-benn.

Ouspenn ma rea burzudou he-uman, sant Beneat a rea c'hoaz burzudou dre zourn ar re all: ober a reaz da zant Maur, evel m'eo merket e buez ar zant-man, d'an 8 a viz genver, bale var an dour evit savetei Placid a oa kouezet en eul lemm.

Pa gouezaz klanv, sant Beneat a reaz he zougen d'an Iliz evit sakramanti; c'houec'h devez araok he varo e reaz toulla he vez, hag he ene a nijas d'ar baradoz d'an 21 a viz meurs euz ar bloavezh 543.

SONJOMP ERVAD :

Sant Beneat a dec'haz en he iaouankiz diouz he vignoued, gant aoun da veza kollet ganto. Deskit gantan tec'het diouz ar goall gompagnuzioù.

En eur ober sin ar groaz en deuz torret ar veren e leac'h m'oa taolet ampouezoun; guelit dre-ze, peger mad eo ober sin ar groaz ha lavaret ar *Benedicite* araok ar pred.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Santel Katell a Zued

(1330-1381)

Ar zantez-man, prinsez euz ar Sued, ha merc'h da Ulson ha da zantez Bere'hed, a oue azalek he iaouankiz, douget braz d'ar vertuz; heuz e doa ouz kement a oa enep ar vodesti hag ar burete.

Unan euz an aotrouned vrasa euz ar Sued, hanvet Egard, o veza he goulennet da bried, he zad a asantaz dioc'htu evithi. Ar verc'h santel a lavaraz da genta: « C'hoant am euz da joum atao guere'hez. » Pa velaz displijadur he zad, ee'h asantaz dimezi: fizianz e doa e roje

Doze d'ezi ar c'hras da joum bepred pur ha guere'hez.

Hogen, deiz he eured, e komzaz d'he fried gant kement a nerz euz a dalvoudegez ar guere'hded, ma teujont d'ober veu, ho daou, da veva atao evel breur ha c'hoar.

Kement-se a dennaz varno grasou braz. Doze a skuil-laz en ho c'halounou al levez, ar garantez-se a laka dispriout plijadureziou an douar, hag a ra d'comp-heuil eaz lezen an Aotroun Doue. Evel n'o devoa nemet eur spered, na garent nemet ar memez tra. An eil a roe skouer d'egile var ar mad, ha keit ha ma vevjont asambles, o devoe an eil evit egile eur garantez disp-ar. Fried Katell a varvaz ar c'henta.

Ar zantez a dremenaz neuze meur a vloavezh e Roum gant he mam. Eno ee'h implije ganti ar pep brasa euz he amzer o pedi var beziou ar verzerien, o velet ar beorien, hag oc'h ober aluzen. Ouspenn-ze iun a rea bemdez, ha bemdez ivez e tremene peder heur o vedita var guirioneziou ar relijion; he fljadur a oa komz gant he mam zantel euz Pasion Hor Zalver: ha pa deue da zonzal er myster braz-se, he c'haloun a veze ken tene-reat, ma skuille eur mor a zaelou.

Goude maro he mam, o veza distroet d'ar Sued, ee'h en em lakeaz en eur gouent merc'hed santel. Ar re-man, o velet he humilite hag he devosion, a reaz d'ezi beza ho zupiorez, en despet d'ezi koulz lavaret, rak ken humbl e oa, m'e doa aon na rafe ket mad he dever. Lakât a reaz eun urz ker kaer da ren er gouent, ma teuaz kalz merc'hed iaouank di, c'hoant d'ezo da zervicha Doue guelloc'h eget er bed.

Erfin, goude beza bet epad eun nebeut bloaveziou skouer he oll leanezed, Katell a gouezaz klanv, hag a zonzaz e oa deut eviti ar mare da vont euz ar bed-man. Pemp bloaz var 'n ugent a oa abaoe ma 'z ea da goves bemdez; kendalc'her a reaz, epad he c'hlenved diveza, da govez aketuz gant muioc'h c'hoaz a evez hag a zevosion eget araok. He c'hlenved a vire na resevje ar gommunion zantel, goulenn a reaz eta ma c'helfe da viana

adori, divar he guele, ar Zakramant meulet ra vezo, setu ma oue digaset an Aotrou Doue en he c'hampr.

Gonde beza great an aktou a feiz, a esperans hag a garantez, ha kinniget he c'haloun hag he buez da Jesus, al leanez santel a dremenaz, d'ar 24 a viz meurs euz ar bloaz 1381.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Berc'hed e deuz great eur zantez euz he merc'h. Eur van gristen, hag a roio skouer vad ha kenteliou santel d'he bugale, a zeuio peurlies a d'ho renta henvel outi. Er c'hountrol, bugale an dud digristen o dezo ho-unan nebeud a zevosion, dre faot ho zud.

II. — Ar guir garantez evit Doue a ra eürusted an dud var an douar, er stad a briedelez zoken. Pebez levenez, pebez peoc'h ne deuz ket bet ar zantez-man gant he fried! Petra zo kaoz ma veler kement a voall-zimeziou? Abalamour ar re a ia assemblez ne zonzont nemeur e Doue. Hogen, ar vertuziou kristen hebken a c'hell renta an dimeziou eüruz.

Santez Katell e deuz bevet gant he fried, evel breur ha c'hoar. Eun nebeudik bian a zent o deuz great eveldo. Resevet o deuz, digant ar Spered Santel, grasou dishenvel braz diouz ar grasou roet d'an dud all, hag abalamour da-ze, n'int ket da veza heuillet gant eur c'halz euz an dud.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Viktorian, Merzer

Ar zant-man, ginidik euz an Afrik, a oue savet mad en he vugaleach. Humerik, roue ar Vandaled, mignoun ar gristenien er penn kenta euz he amzer, a hanvaz anezan gouarner e Karthaj, brasa kear en doa en he rouantelez. Met Humerik a jenchaz krenn a benn eun nebeut bloaveziou, ha var he urz, tri c'hant eskop ha pemp mil beleg a oue barnet d'an harlu, da lavaret eo, kaset er meaz euz ar vro; kalz kristenien a oue lakeat

d'ar maro. O veza m'en doa Viktorian great mad he zever atao, ar roue, eüruz o kaout eur gouarner leal ha sentuz, a zonzje e rafe d'ezan plega evel ma karfe.

Skriva a reaz eta d'ezan eul lizer: « Gouzout a ran, » emezan, oc'h euz gouarnet atao Karthaj gant ar brasa » lealdet, n'em euz nemet meuleudi da rei d'eoc'h abal- » lamour m'oc'h euz diouallet mad kear, ha miret eun » urz kaer enni. Gouzout a rit em euz difennet ouz ar » gristenien katholik heuil ho relijion, ha fizians an » euz'e sentoc'h ouzin, evel m'oc'h euz great atao betek » vremen. Great em euz eun nebeudik honor d'eoc'h » p'em euz hoc'h hanvet da ren Karthaj, met henoriou » kalz brasoc'h a roin d'eoc'h, p'o pezo roet d'in ar » merk nevez-se euz ho karantez evidon. »

Viktorian, var c'hed pell a oa euz al lizer-ze, a res- pointaz: « Ho trugarekât a ran, roue, euz ar merkou a » honor oc'h euz dija roet d'in, hag euz ar re a fell » d'eoc'h rei d'in c'hoaz; met ne rin morse netra enep » va c'houstians. A hent all, na gavoc'h biken sentu- » soc'h den eget ho kouarner; met kredi a ran oc'h re » eün, re leal evit goulén diganen netra enep an Aotrou » Doue. Trei kein d'ar relijion gatholik, d'ar guir » relijion, na rin birviken. Va mestr oc'h, her gouzout » a ran ervad; lemel a c'hellit diganen karg ha madou, » ha va lakât var an douar noaz; merzeria a c'hellit » zoken va c'horf, en ho kalloud emañ; met nag ar » poaniou krisa, nag an tañ, nag ar maro na rint d'in » nac'h va feiz. »

Ar respount kalounek-se a reaz da Humerik mont er meaz anezan he-unan; var he urz, ar gouarner a oue taolet er prizoun, ha bourrevet en eun doare skrijuz. Ar merzer a oue astennet var eur starn koat, chaebet e oue var he izili ken a strakjont, dispennet e oue he gorf gant eur gribin houarn, ar gouliou a oue nevezet ha kresket gant eol bero.

Viktorian ne laoskaz ket eur glemmaden. Ar c'hristen kalounek ne oue ket trec'het gant ar vourrevien, ar re-man eo a skuizaz oc'h ober d'ezan divoaska poaniou spountuz. Ar zant a resevaz erfin taol ar maro: gounezet en doa he gurunen (484).

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a oa eun den leal, senti a rea ouz he roue, met senti a rea ouz Doue da genta. Lavaret a reaz da Humerik: « Oll vadou ar bed-man ne raint ket d'in trei kein da » Jesus-Christ; oll izin ar vourrevien ne raio ket d'in nac'h » va feiz. » Evit guir koll a reaz he garg, he vadou, koll a reaz ar vuez-man memez, met gounit a reaz ar vuez guirion, al levenez a bado da viken er baradoz, abalamour na gollaz ket he feiz. Peger kaer e oa he garantez! He oberou a oa unan gant he gomzou.

Ha ni, kristenien eveldan, petra reomp-ni evit Doue? Mar her c'haromp, ez aimp d'ar baradoz, ma n'her c'haromp ket, ez aimp d'an ifern.

Ac'hanta, va ene, daoust ha bez' e vezi atao diseblant dirak madoberou ker braz, gourdrouzou ker spountuz, promesaou ker kaer? Penaoz e c'hellez-te choum heb karet eun Doue ker braz ha ker santel? « Ah! va Doue, a lavare sant » Aogustin, piou oc'h-hu ha piou oun-me, ma c'hourc'he » mennit d'in ho karet, ha ma c'halvit varnoun ar brasa » goalheuriou ma n'ho karan ket! Daoust ha goasoc'h tra » a c'hell en em gaout ganen, eget n'eo choum heb ho karet? » Petra ra d'eoc'h-hu pe m'ho karo, pe n'ho karin ket? Ha » c'houi vezo eürusoc'h mar ho karan? Ha c'houi vezo ne- » beutoc'h eüruz ma n'ho karan ket? O karantez va Doue, » c'houi a fell d'eoc'h ho karfen, evit ma vezin eüruz dre » ar garantez am bezo evidoc'h. Ah! re zivezad em euz ho » karet, gened bepred koz ha bepred nevez! re zivezad em » euz ho karet? »

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Gabriel, Arc'heal

Sant Gabriel a zo an arc'heal karget gant Doue da ziskleria d'an dud myster an Inkarnasion, ha setu perak an Iliz Santel e deuz savet eur gouel evit he henori. Sant Gabriel a zo unan euz ar seiz eal gallouduz a zo atao dirak Doue; he hano a ziniñ den Doue, pe nerz Doue.

Kenta tro ma 'z eo hanvet er Skritur Zakr, e oue kaset gant Doue da sklerijenna ar prophet Daniel, ouspenn 500 vloaz araok ginivelez Hor Zalver. Daniel en doa guelet, dre he gousk, an traoù a dlie en em gaout en amzer da zont; guelet en doa, eur vech, ar baradoz digor, an Tad eternal dindan furm eun den koz, bleo guen d'ezan, azezet var eun tron tan, ha dirazan Mab an den. Ha Doue an Tad en doa roet da Vab an den pep galloud var an oll dud hag an oll broiou.

Daniel en doa guelet, neuze ha meur a vech all, ar boblou oc'h en em ganna dindan furm loened gouez, hag e pede, hag e rea pinijen evit kaout sklerijen var an oll draou-ze, hag evit ma teuje buan ginivelez ar Messias. An eal Gabriel eo a deuz, dindan furm eun den iaouank kaer, da lavaret d'ezan a berz Doue: « Roet e vezo a » nevez urz da zavel Jerusalem gant he mogeriou » krenv, hag euz an devez-se betek ar C'hrist-Roue, e » tremeno dek sizun ha tri-ugent. »

Ar zizuniou ma komze an arc'heal anezo, a zo sizuniou a vloaveziou; d'ar mare merket gant Doue, he Vab a gemeraz natur an den.

Eun nebeut miziou araok ma oue kaset sant Gabriel da Nazareth, e tiskleriaz da Zakariaz, e templ Jerusalem, e tlie beza tad da zant Ian Vadezour. Zakariaz, koz dija, na gredaz ket dioc'h-tu, setu ma lavaraz an eal d'ezan: « Me a zo Gabriel, digaset gant Doue betek ennoc'h. » Met pa 'z eo guir n'oc'h euz ket kredet var va ger. » c'houi a joumo mut, ken a vezo deut da vir kement » am euz diskleriet. » Ha Zakariaz a joumaz mut, betek ma oue ganet sant Ian.

C'houec'h miz goudeze, an arc'heal a icaz da Nazareth, kear vian euz ar Galilee, da di eur verc'hez a oa Mari he hano, hag a ziskenne euz a lignez ar roue David. Diskleria a reaz d'ezi e oa choazet gant Doue evit beza mam an Hini a oa bet great hano anezan gant ar bropheted pell a oa hag a dlie savetei an dud. Mari a respountaz, evel m'eo merket en Aviel, hag ar respount-se a lenner er gouel a zigouezo vare hoaz: « Setu servi- » cherez an Aotrou Doue, ra vezo great d'in hervez

» ho ker. » Hag an arc'heal, great he gefridi gantan, a ieaz kuit.

Ar zent a lavar d'eomp: « An arc'heal Gabriel eo a » zo bet o tiskleria d'ar bastored e oa ganet ar Mabik » Jesus e kraou Bethleem. » An Aviel a verk d'eomp komzou an eal: « Deut oun, emezan, da zigas d'eoec'h » eur c'helou braz, eur c'helou a levenez, ar Zalver a zo » ganet », met na ro ket hano an eal. Hag ar zent o deuz diskleriet var gement-se: « Pa 'z eo guir an eal » Gabriel en deuz sklerijennet Daniel divar benn an » amzer ma tlie ar C'hrist genel, kelennet Zakariaz » var ginivelez sant Ian Vadezour, komzet gant Mam » Doue a berz an Drindet santel, divar ben an Inkar- » nasion, e oa dleet d'ezan beza da genta o lavaret » d'an dud: « Ganet eo ar Messias, ar Zalver m'e- » maoc'h var c'hed anezan. »

Ar zent a lavar d'eomp ouspenn, eo hen a zihunaz sant Joseph e kreiz an noz, evit lavaret d'ezan: « Ke- » merit ar bugel hag he vam, ha tee'hit ganto d'an » Ejipt, rak ar roue Herodes a glask ar c'hrouadur » evit he lakât d'ar maro. »

SONJOMP ERVAD :

Peger skeduz, peger gallouduz e tle beza an Arc'heal Gabriel er baradoz!

Eur roue fur, p'en devez c'hoant d'en em glevet gant eur roue all, a glasko en he rouantelez eun den savet mad ha gouizieq evit kaozeal en he leac'h; seul brasoc'h eo ar gefridi a zo da ober, seul noploc'h e vezo ar c'hannad. Doue, an Oll-C'halloudeg, en doa d'en em glevet gant ar Vere'hez divar benn an Inkarnasion, divar benn ar brasa tra a zo bet hano anezan var an douar; ha choaz a rai eun eal dister? Nan, a dra zur. Kemeret en deuz an eil euz ar seiz arc'heal a zo atao dirazan, a zo dreist an oll elez all dre ho gened, ho gouiziegez, ho zantelez; diskuillet en deuz he vennoziou d'an arc'heal-ze da genta. Na peger kaer e tle eta beza en env!



AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Gouel Maria Veurs



Abaoue meur a vill bloaz, ar bed a oa var c'hed euz ar Zalver a dlie prena an dud, kollet ganto ar baradoz dre ar pee'hed orijinel. Pa oue deut ar mare merket gant Doue a oll-viskoaz, an eal Gabriel a oue kaset d'eur gear euz ar Galilee, hanvet Nazareth, da gaout eur vere'hez hanvet Mari, dimezet da eun den euz a lignez ar roue David, a oa he hano Joseph.

An eal, o veza eat dirazi, a lavaraz: « Me ho salud, » leun a c'hras, an Aotrou Doue zo ganeoc'h, benniget » oc'h dreist an oll gragez. »

Ar Vere'hez, leun a humilite, a oue nec'het o klevet ar zalud-se, met an eal a lavaraz d'ezi kercent: « N'o

» pezet aon ebet, Mari, rak kavet oc'h euz gras dirak
 » Doue; konseo a reot, ha lakât a reot er bed eur mab
 » hag a hanvot Jesus. Braz e vezo, hanvet e vezo Mab
 » an Hini a zo dreist peb tra, Doue a roio d'ezan tron
 » David, he dad, ha ren a raio da viken e ti Jacob. »

Mari, o veza m'e doa great veu da jom bepred guer-
 c'hez, a c'houlennaz: « Penaoz ee'h en em gavo
 » kement-se, rak va fried ha me a vev hon daou evel
 » breur ha c'hoar? » An eal a respountaz: « Ar Spered-
 » Santel a ziskenno ennoc'h, ha galloud an Hini a zo
 » dreist peb tra ho koloio euz he skeud; setu perak
 » ar frouez santel a lakeot er bed a vezo hanvet Mab
 » Doue. Elisabeth ho kiniterv a dle, daoust ma 'z eo
 » koz, lakât eur mab er bed a benn tri miz ama, rag
 » n'euz netra dreist galloud Doue. »

Ar Verc'hez, el leac'h en em rei d'an ourgouil, a res-
 pountaz humbl ha modest: « Setu servicherez an
 » Aotrou Doue, ra vezo great d'in hervez ho ker. »
 Kerkent hag ar gomz-se, Mab Doue a zo en em c'hreat
 den, ha setu ar pez a hanver myster an Inkarnasion.

Guelomp, e berr gomzou, eun nebeut euz ar c'hente-
 liou a gavomp er myster-ze.

Da genta, ar c'hrouadur furmet euz goad pura an
 Itroun Varia dre vertuz ar Spered-Santel, a zo e gui-
 rionez Mab Doue, rak n'eo bet, e mare ebet, den heb-
 ken, Mab Doue eo bet kerkent ha ma 'z euz bet anezan.
 Lavaret a dleer eta gant guirionez: ar c'hrouadur-ze
 a zo guir Vab Doue.

D'an eil, ar c'hrouadur-ze, hanvet Jesus, a zo evel
 Doue, Mab unik an Tad; Doue eo evel an Tad hag ar
 Spered-Santel, rak bez' en deuz ar memez natur gant
 an daou Ferson all euz an Drindet.

D'an trede, e Jesus-Christ ez euz diou natur en eur
 persounach hebken, a zo persounach Mab Doue: natur
 Doue, a reseo digant he Dad a bep eternite; natur
 an den, en deuz resevet digant he Vam, da zeiz he
 Inkarnasion.

D'ar pevare, ar Verc'hez Vari e deuz guir da veza
 hanvet Mam Doue. Jesus, kerkent ha m'euz bet ane-

zan, a oa mab Doue: ar Verc'hez Vari, pa 'z eo guir eo
 Mam Jesus, a zo eta Mam Doue. Jesus, evel ma lavar
 doktored an Iliz, a zo d'ezi muioc'h eget ne deo ar vu-
 gale all d'ho mam; Jesus a zo oll d'ezi ha da Zoue.

SONJOMP ERVAD :

Peger braz eo an Itroun Varia! Mam Doue eo.

N'euz hano ebet ker kaer, ken huel hag hennez, na var an
 douar nag en env. Ar arc'heal Gabriel, unan euz an elez
 huela, en deuz salutet ar Verc'hez gant respet hag humi-
 lite; henoromp ar Verc'hez, o lavaret gant devosion he gom-
 zou d'ezan; lavaret int bet d'an Itroun Varia a berz an
 Drindet Santel, hag ar beden a zeu varlerc'h a zo bet savet
 gant an Iliz, pried Jesus-Christ.

Me ho salud, Mari. Ar ger Mari a verk ar memez tra gant
 ar ger rouanez: Mari a zo e guirionez rouanez an env hag
 an douar.

Leun a c'hras. Doue en deuz pinvidikeat ar Verc'hez euz
 an oll grasou a c'helle rei d'eun den.

An Aotrou Doue zo ganeoc'h. Ra vezo ganeomp-ni ive, ra
 joumo da ren en hor c'halonou dre he c'hras.

Benniget oc'h dreist an oll graziez. Mam ha guerc'hez er
 memez amzer; Mam da Zoue!

Ha benniget eo ar frouez eus ho korf, Jesus. Mil bennoz
 d'eoc'h, Mari: roet oc'h euz d'eomp Salver ar bed.

Santez Mari, Mam da Zoue. Ha mam d'eomp ive.

Pedit evidomp, pec'herien. C'houi, Mam ganet dinam da
 choumet atao dibec'h, o pet truez ouzomp-ni a zo, siouaz!
 dibarfet.

Brema. P'emaomp e riskl da veza touellet gant ar bed, ar
 c'hig pe an drouk-spered.

Hag en heur euz hor maro. Hor sikourit neuze dreist-oll,
 rak gallouduz oc'h, hag ar maro a varn an eternite.



AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Ludjer, Eskop

Sant Ludjer a zo ganet er Friz, var dro ar bloaz 743. Diskouez a reaz, a vianik, eur spered digor hag eun devosion dener; setu ma oue lakeat er skol gant eur beleg santel ha gouzidik meurbed. Deski a reaz buan ar pezh a c'hellet da anaout er skoliou neuze, met deski a reaz, ouspenn, servicha mad an Aotrou Doue.

Tri bloaz ha tregont e oa pa oue beleget. Rannet e oa he galoun o velet tro var dro d'ezan tud hag a veve d' paianed, heb sonjal an distera en ho ene, en ho zilveridigez; ioul en doa d'ho zavetei. Prezeg a reaz heb ehan guirioneziou ar relijion gristen; goapeat ha goall gaset e oue da genta, met ne fallgalounaz ket. Digollet e oue euz he boan.

An dud-se, griet ho c'haloun gant ar pec'hejou hag an techou fall, a jenchaz a nebeudou, a gemeraz ple-gou kristen, boazamanchou mad, ha gant an amzer, ar peb brasa anezo a oue da Zoue. Hon Tad Santel ar Pab a hanvaz neuze Ludjer eskop, evit m'en dije muioc'h a c'halloud var he bobl. An oll a oue laouen, nemet ar zant: re a honor a reat d'ezan, var he veno, hag aon en doa rak ar zam pounner a lakeat var he ziouskoaz; met red e oue d'ezan plega da volonteiz an eskibien all, ha da volonteiz Charlemagn a rene neuze var ar Frans hag an Allemagn, hag en doa ar brasa fizians e Ludjer.

An eskop nevez a oue pastor ha tad he bobl. Kement en doa a roe d'ar beorien, ne zonje ket d'ezan en defe morse roet aoualc'h d'ezo.

En desped d'ar boan a gemere Ludjer evit ober he zever penn-da-benn, e oue kavet tud aviuz da damall anezan dirak an impalaer Charlemagn. « Roue, emezo, » an eskop-se, var zigarez tremen dioc'h an dud, a

» laosk an ilizou dirapar, he oll venneien a 'z a gant ar » beorien. » Gaou a lavarent, met an impalaer a roaz skouarn d'ho zelaou, hag a gemennaz da Ludjer dont d'he gaout. Ar zant a zentaz raktal.

N'ez cer ket e kampr eur roue evel ma 'z eer e lochen eur paour: gortoz a ranker peurlies. Ar zant, gant aon da goll he amzer e kichen an or, en em lakeaz da lavaret he ofis. A greiz m'edo o pedi, eun ofiser a zigoraz an or, hag a lavaraz: « An impalaer a c'houlenn » ac'hanoec'h. — Bremaik, a respountaz Ludjer, pedit » an impalaer da c'hortoz eur pennad. » Hag ee'h echuaz he ofis var he bouezik.

Kerkent ha m'en devoue klozet he leor, ez eaz e kampr an impalaer, met hema en doa ranket gortoz eur pennad, hag a oa bet braz an dra-ze gantan. « Eskop, emezan, perak n'oc'h ket deut dioc'htu, p'em » euz ho kalvet? — Impalaer, eme Ludjer, n'em euz » great nemed senti ouzoc'h. — Ha penaoz? eme a » roue souezet. — P'oc'h euz va hanvet da eskop, oc'h » euz lavaret d'in: grit servich Doue da genta, ha ser- » vichit an dud da c'houde. Setu perak, pa 'z eo guir » e lavaren va ofis p'oun bet galvet, oun choumet d'he » echui, araok dont d'ho kaout. — Mad oc'h euz great, » eme an impalaer. Kendalc'hit da zervicha Doue da » genta, grit vad d'ho pobl, ha na rit van euz lavarou » an teodou fall. » Hag e reaz d'ar zant distrei d'he eskopti, seder ha laouen.

Ar zant-man a varvaz evel ma koez eur zoudard var dachen an emgann. Da zeiz diveza he vuez, e reaz eur brezegen gaer en eun iliz, e lavaraz kenavezo d'an dud; ac'hano ez eaz d'eun iliz all, diou leo larkoc'h, evit lavaret an oferen hag ober eun eil brezegen. Diskleria a reaz freaz: « Doue am galvo fenoz davitan, » lakât a reoc'h va c'horf er vered, n'eo ket en eun iliz eo. »

En noz-se eo e tremenaz, leun a feiz, a fizians, a garantez, hag he vez a oue toulet er vered, hervez he c'houlenn.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Lujder, galvet da vont dirak Charlemagn d'ar mare ma lavare ha bedennou, a respountaz e komze ouz brasoc'h mestr eget an impalaer, hag a gendalc'haz da bedi. Ped ha ped all, gouskoude, a deu da derri ho fedennou var an disterra digarez!

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Ian Damaseen

Ar zant-man, dibabet gant Doue da zifen ar feiz katholik enep an heretiked euz he amzer, a oue roet d'ezan gant he Grouer eur spered euz ar re lemma.

Ganet e Damas, Ian en doa evit tad kenta ministr ar c'halif pe roue ar Mahometaned. Tad Ian, kristen mad, a oa bet savet huel gant eur roue divadez, abalamour d'he furnez vraz ha d'he c'houiziegez dispar: rei a reaz d'he vab gouizieka mestr a veve d'ar mare-ze, hag ar skolaer iaouank, goude eun nebeut bloaveziou, a oue ken desket hag he vestr; he zevosion a oa par d'he zeskadurez.

Tad Ian o veza maro, roue Mahometan Damas a roaz d'ar mab renk ha galloud an tad. Ian a enebaz da genta; da c'houde, e plegaz, hag e poaniaz da ober mad al labour a oa fiziet ennan. Er bloaz 726, Leon Izorian, bet marc'hadour loaned en he iaouankiz, ha deut da veza impalaer Konstantinopl, a zonzaz e oa pec'hed henori skeudennou ha taolennou ar Vere'hez hag ar zent evel ma rea ar gristenien: « Ho adori a reer, » emezan. Var he urz, ar zoudarded a vruzumaz ar skeudennou pe imachou, hag a zevaz an taolennou.

Jermen, arc'heskop Konstantinopl, ha Ian Damaseen a skrivaz dioc'htu, evit diskleria freaz ar virionez: an

imachou a vez henoret, abalamour ma tigasont da zonz d'eomp euz ar Vere'hez hag euz ar zent, met na vezont ket adoret. Re all a skrivaz c'hoaz, met an daou-man a oue klevet ho mouez dreist an oll. An impalaer, drouk ennan, a reaz kas an arc'heskop da bell bro, met penaoz dont a benn euz ministr braz roue Damas? Roue Konstantinopl n'en doa netra da velet varnan.

Leon, en he fallagriez, a reaz ober eul lizer faoz en hano Ian, kinnig a rea el lizer-ze, guerza ar roue he vestr ha kear Damas da impalaer Konstantinopl. Leon a gasaz ar falz lizer d'ar roue, en eur lavaret: « Mi- » gnoured oump hon daou, setu perak ne 'z in ket da » glask trabas ouzoc'h; guelet a rit gouskoude ez euz » tud, tost d'eoc'h, gwest d'ho kuerza. »

Ar roue, ter da vont e kounnar, a reaz da Ian dont dioc'htu dirazan, diskouez a reaz d'ezan al lizer en eur lavaret: « Penaoz, Judas ma 'z oc'h, oc'h euz-hu ar » galoun da skriva eur seurt tra? Ne c'hellen ket ho » sevel hueloc'h, ha c'houi a zo o klask va guerza! » Goardou, troc'hit dioc'htu an dourn deou en deuz » great an torfet-se, en deuz skrivet eur seurt lizer! » Ian ne oue ket laosket da gomz: he zourn a oue trouc'het raktal; ne reaz ket eur glemmaden.

Dioc'h ar pardaez, ar paour keaz mough a c'houlennaz kaout he zourn en dro: rentet e oue d'ezan. Daoulina a reaz neuze dirak skeuden ar Vere'hez Vari: « Mam zantel va Doue, emezan, va dourn deo a zo bet » trouc'het, ha gouzout a rit perak eo en em gavet » kement-se. Guerc'hez gloriuz, an hini a zo dourn » deou an Tad eternal en deuz great, var ho koulen. » kalz traou burzuduz, rak c'houi a zo he Vam; grit » m'am bezo va dourn a nevez, ha me a implijo anezan » da skriva ho madeleziou, ha re ho Mab Jesus. »

Dont a reaz d'ezan eur c'housk burzuduz; pa zihunaz, he zourn a oa stag mad ha iac'h: eur roudennik ruz, ha netra ken, a verke roud ar c'hleze.

Ian a icaz dioc'htu da gaout ar roue; heman, savet keuz gantan o velet ar burzud, a c'hoanteaz miret ar zant da dosta d'ezan evel araok; met Ian a lavaraz kenavezo d'ar bed evit atao.

Mont a reaz da glask ar peoc'h etouez ermited an dezert, eno e oue renet gant eur manac'h koz, hag a reaz d'ezhan beva sioul en eur zonzjal en he zilvidigez. Goude eur maread bloaveziou, ar manac'h-se a lavaraz d'ezhan: « Deskadurez o peuz, skrivit brema. »

Var urz he vestr, ar manac'h iaouank a skrivaz: he labourou a zo bet eur sklerijen gaer evit an dud desketa en he amzer, hag a vez lennet gant respet, hirio c'hoaz. Reseo a reaz an Urziou sakr er bloaz 740, ha mervel a reaz d'he bevar-ugent vloaz, goude beza difennet ar guir feiz epad he vuez. Lakeat eo bet gant an Iliz e renk an Doktored.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, pareet gant ar Vere'hez, a joumaz atao eur gleizen ruz en dro d'he alzourn. Perak ar gleizen-ze? Evit sikour anezan da zalc'her sonj euz ar burzud. Meur a hini a bed kalounek da c'houlen ar grasou m'o deuz ezom anezo; goude m'o deuz bet ho goulen, o deuz sonj eur pennad, met dont a reont da ankounac'hât a nebeudou gant an amzer. Sant Ian en deuz bet sonj atao, he zourn kleizennet n'en deuz skrivet biskoaz nemet traou santel, kenteliou kaer en honor da Jesus-Christ ha d'he Vam benniget. Dalc'homp sonj, ni ive, euz grasou Doue.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Ian Kapistran

(1385-1456)

Ian a c'hanaz er bloaz 1385, e rouantelez Napl: he dad a oa pinvidik. Savet mad e oue gant he dud, met troet e oa gant ar bed, hag e reaz eun dimezi euz ar re gaera. Roue Napl en doa fizians ennan, ha Ian a oa a vel da gaout eur renk huel hag henoriou braz.

Siouaz! ar bed a zo faziuz: pa gav d'eun den n'en deuz ken da ober nemet asten he zourn da baka an eürusdet, e vel an eürusdet o nijal pell dioutan.

Sevel a reaz brezel etre kenvroiz Ian ha roue Napl, heman en doa soudarded mad, hag a c'hounezaz. Ian en doa poaniet da lakât ar peoc'h etre an diou goztez, met diskredi a oue great varnan, ha taolet e oue er prizoun gant he genvroiz kounnaret. Ar roue ne reaz nemeur a van pa glevaz lavaret e oa bet chadenet ha prizouniet Ian, he vignoun: ar paour keaz den, dilezet gant an oll, a skuillaz daelou c'houero var he eürusdet kollet. Gant an dra-ze, he bried a zeuaz da vervel, ha neuze ar prizounier a lavaraz: « D'eoc'h-hu » hebken e vezin hiviziken, o va Doue. »

[Kerkent ha ma c'hellaz dont er meaz euz ar prizoun, ez eaz d'eur gouent euz Urz sant Fransez: guerzet en doa dija he oll vadou.

Gant aoun ne 'z aje var he giz, ar manac'h iaouank en devoue ar goasa traou da c'houzanv araok beza resevet da ober he veuiou; diou vech zoken e oue taolet er meaz euz ar gouent evel eun den ha n'eo mad da netra. Ian ne fallgalounaz ket. En despet d'ar goaperez, d'ar geriou trenk, d'an disprijans a reat varnan, e c'houlenne beza resevet, ha digemeret e oue erfin evit mad. Met eun humilite ker braz a dlie dougen frouez kaer a zantelez. Ian en em roaz a greiz kaloun d'ar bini-jen: iun a rea aliez, kouskat a rea var ar plench noaz, epad diou pe deir heur bemnoz hebken; choum a reaz c'houec'h vloaz ha tregont heb debri an distera begad kig; gant an dra-ze, e pede koulz lavaret noz-deiz, hag e poanie da zeski mad ar Skritur Zakr evit sklerijenna an dud dizesk.

Deskadurez ha devosion Ian Kapistran a reaz d'he brezegennou dougen kalz a frouez.

Kaera devosion Ian a oa he garantez evit Jesus stag ouz ar groaz, hag evit ar Vere'hez Vari. Pa veze daoulinet eharz treid he grusifi, e skuille daelou puill; pa gomze euz ar Vere'hez Vari en he brezegennou, an dud a vele avechou eur sklerijen dudiuz o para azioc'h he benn.

Tan he garantez a reaz d'ezan mont euz an eil bro d'eben evit rei sklerijen gaer ar feiz da vuioe'h a dud. Prezeg a reaz el Lombardi, en Aotrich, er Sax, er Bohem, er Pologn, hag e peb leac'h e tigoraz ho daou-lagad da galz a heretiked, hag e starteaz ar guir gristenien er feiz katholik.

Ar Pabed a reaz d'ezan beza ho c'hannad meur a vech. Ar zant a zente laouen, rak eur mestr e oa da viret ar peoc'h etre an dud; met biskoaz ne falvezaz d'ezan gouarn eun eskopti.

En he amzer, an Turked o doa saillet var an Europ, hag ar gristenien o doa aon braz razo. Goulennet e oue sikour digant Ian Kapistran, ha kerkent ez eaz laouen da arme ar gristenien. Eno e kennerzaz an oll dre he brezegennou leun a dan, e reaz d'ar bec'herien heuil guelloc'h ho relijion, e pedaz hag e reaz pinijennou rust evit tenna bennoz an Aotrou Doue var ar zoudardet kristen: ar re-man a c'hounezaz eur viktor gaer var an Turked divadez.

Klennel a reaz prest goude, ha renta a reaz he ene kaer da Zoue, d'an 23 a viz here 1456, d'an oad a 71 vloaz.

SONJOMP ERVAD :

Pegen eüruz eo ar zant-man, breman, o veza m'en deuz bet eur groaz pounner da zougen pa oa e bar he vrud. Troet en deuz kein d'ar bed, en em roet eo oll da Zoue. Red eo d'eomp, evel dan, dougen hor c'broaz, ha dougen an hini a zo roet d'eomp gant Doue. Ar c'hountrolezioù en em gav ganeomp, a zo digaset d'eomp gant Doue evit brasa mad hon ene. E leac'h eta ho digemeret evel en despet d'eomp, resevomp-hi gant levez: eur zikour braz int evit ar baradoz.



AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MEURS

Sant Eustach, Abad

Ar zant-man a oa ginidik euz ar Bourgogn, hag a oue skoliet gant sant Miet, eotr d'ezan, hag eskop e Langres.

Deski a reaz abred disprija madou ha plijadureziou faoz ar bed, hag evit tee'het diouto ha labourat da zavetei he ene, ez eaz e kouent Luxeuil, a oa gouarnet en amzer-ze gant sant Kolomban. Biskoaz diskibl ne reaz muioc'h a honor d'he vestr: he aket da bedi ha da heuil ar reolen a reaz d'ezan beza kemeret evit skouer gant ar re all.

Ar rouanez Bruno o veza kouezet en eur pec'hed braz, e doa roet dre-ze skouer fall d'he fobl; sant Kolomban a ieaz d'he c'haout, hag a skandalaz anezi gant kalz a zouder. Met ar rouanez a ieaz drouk braz enni, hag a c'houe'hemennaz da Golomban kuitat he gouent dioc'htu. Sant Eustach, o velet e oa riskl evitan o choum e kouent Luxeuil heb sant Colomban, a dec'haz ive gant sant Gall, evit mont var douarou roue an Austrasi. Eno e oue great digemer mad d'ezo, ha sant Kolomban, o veza klevet kement-se, a zeuaz ive da veva en ho c'houmpagnunez.

Roue an Austrasi a velaz gant kement a blijadur ar venec'h santel o choum var he zouarou, ma lavaraz da zant Kolomban choaz al leac'h a blijfe ar muia d'ezan en he rouantelez; neuze ar zant a joazaz eul leac'h distro ha goudor: eno e savaz eur gouent nevez.

Kas a reaz, da c'houde, Eustach da ren kouent Luxeuil, hag ar zant a deuaz a benn, gant amzer ha pasianted, d'ober ar peoc'h gant ar rouanez. Neuze e reaz d'he venec'h heuil ar reolen strisoc'h eget araok.

E nebeut amzer, ar gouent a jenchaz doare: an oll en em roe d'ar beden ha d'ar binijen. Ar garantez a ziskoueze evit he Vreudeur, ar boan a gemere da entent outo ha da bourvei d'ho ezomou, a c'hounenze d'ezan kaloun an oll; sevel a reaz kement a vrud euz a gouent Luxeuil, ma tirede tud euz a bep leac'h da c'houlouen beza digemeret enni. En em gaout a reaz evelse, tost da c'houec'h kant manac'h er gouent er memez amzer, prest oll da zenti ouz sant Eustach ha da heuil he reolen. En ho zouez e kounter meur a zant, evel sant Gaignon, bet goudeze eskop e Laon; sant Omer, bet eskop Rouen; sant Ochar euz Noyon, hag eun niver braz a re all.

Eustach en devoue ive an heurvad da glevet kana an ofiz divin en he gouent, heb ehana koulz lavaret, rak ar venec'h a veze rannet e meur a rum, evit meuli Doue an eil goude egile.

Erfin, ar zant-man, goude beza henchet kement a dud var hent ar baradoz, a ieaz da reseo he gurunen digant Doue, er bloavezh 625, var dro an oad a dri-ugent vloaz.

SONJOMP ERVAD :

An abad santel-man, goude kemeret soursi euz c'houec'h kant relijiuz, a gawe c'hoaz amzer aoualc'h da bedi, hag a joume bepred unanef gant Doue. Ha c'houi, evit an distera tra, a lez a gostez ho pedennou, pe a lavar anezo heb lakât an distera evez. Ma karfemp implija mad hon amzer, e kafjemp tro d'ober hon deveriou a gristen gant hon labourou all.

E kouent Luxeuil e oa c'houec'h kant manac'h: ar peoc'h hag ar garantez a rene etrezo, abalamour an eil a roe skouer vad d'egile. Ententomp eta pegement a nerz en deuz ar skouer vad, ha pegen eaz eo beva santelamant e touez tud devot! Pebez tra gaer eo kaout eur goumpagnunez vad; nag a blijadur a gaver o veva en eun ti e leac'h ma 'z euz urz, ha tud a zoujans Doue!



AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ MEURS

Sant Ian Klimak, Abad

Ar zant-man, ganet er Palestin var dro ar bloaz 525, a oue brudet abred dre he spered hag he vouiziegez. An dud a lavare d'ezan: « Bez' e pezo danvez, plijadur hag » henoriou er bed-man, » met d'he c'houezek vloaz e troaz kein d'ar bed evit mont da veva en eul leac'h distro, dindan lezennou eur manac'h koz ha santel. Gant aon na vije tentet da gomz euz he spered hag euz he zeskadurez, ec'h en em voazaz da veva sioul: ne gomze nemed oc'h red.

Pevar bloaz goude ma oa deut da veva pell dioc'h trouz ar bed, ec'h en em voestlaz da Zoue evit atao.

Eun nebeut bloaveziou goude, an ermit koz a gentelie Ian Klimak a varvaz, setu ma 'z eaz hema en eul leac'h distrooc'h c'hoaz, evit beva he-unan kaer. Divar neuze e renaz eur vuez euz ar re galeta.

Ar peb guella euz he amzer a dremene o pedi en he lochen; ne 'z ea er meaz anezi nemed da zadorn ha da zul evit mont d'an iliz diou leo ac'hano, da ober he zevosionou, ha da glevet an oferen. Lenn a rea kalz levriou devot, evit beza santeloc'h.

Gant aon da goll he humilite, e kendalc'he da veva sioul, hag evit beza didrouoc'h c'hoaz, e stankaz eun toull kleuz a oa en eur roc'h tost d'he lochen, hag ez ea eno, bep er mare, da ober pinijennou rustoc'h ha kaletoc'h.

He humilite hag he binijennou a reaz da Ian Klimak kaout eur galloud braz var an drouk-spered. Eur manac'h, Isaak he hano, a veze tentet dalc'had gant diaoul al luxur, hag ar paour keaz den a veze beuzet avehou he spered en eur mor a lousdoni. Enebi a rea,

ha dre-ze n'en doa pec'hed ebet, met ar zonjezonou fall-ze a deue ken aliez var he spered, ma oa var nez koll kaloun hag en em rei d'an dizesper. Mont a reaz da gaout an ermit santel, diskleria a reaz d'ezan he anken hag he drubuill, neuze Ian a lavaraz: « Greomp » eur beden asamblez, » ha goude eur beden great a » greiz kaloun, Isaak ne oue mui tentet.

Epad ma rene Ian Klimak ar vuez kalet-se, ar brud euz he zantelez a rede dre ar vro, ha pa varvaz rener braz an oll ermited, hen eo a oue choazet evit beza lakeat en he leac'h. Pemzek vloaz ha tri-ugent e oa.

An ermited a c'houlennaz neuze digant Ian skriva al lezennou a dle beza heuliet gant eur c'hristen hag en deuz c'hoant da zevel betek an huella pazen euz ar zantelez. An ermit, humbl atao, a lavaraz nan da genta; ne oa na desket, na santel aoualc'h, var he veno, evit ober al labour a c'houlennet digantan. Plega a reaz evelato, gant an amzer, pa oue great aoualc'h varnan; ober a reaz eul lev'r kaer hanvet « Skeul, » abalamour ma kaver emman kenteliou ha skoueriou hag a zikour eun den da zevel, pazen ha pazen, betek an huella santelez.

Ar zant, abalamour ma oa bet hanvet Superior en despet d'ezan, a glaske an dro da deuler divarnan ar zam a oa bet lakeat var he ziouskoaz. Eun devez e c'hellaz rei he zilez; ne oue mui, divar neuze nemed eur manac'h ken dister hag ar re all, met en devez-se, he ene a oue kel laouen ha ma vez tud ar bed pa vez diskleriet d'ezo e vezont savet en henoriou kaera.

Mervel a reaz d'he bevar-ugent vloaz, er bloaz 606.

SONJOMP ERVAD :

An oll n'o deuz ket resevet digant Doue ar c'hras da bedi ken devot hag ar zant-man, met an oll a c'hell evelato pedi, pe hi a zo desket, pe hi n'int ket. Peb den a anavez aoualc'h he ezomou: ar beorien, ar re zoken o deuz an nebeuta deskadurez, a oar an doare da ziskleria ho foaniou, da ziskouez ho dienez evit kaout sikour digant an dud vad. Ober orezon, da lavaret eo, ober ar beden a galoun ne c'houlen ket muioc'h

a spered; peb hini a anavez ezomou he ene, pep hini a c'hell ho diskleria da Zoue, goulen sikour digantan, en em ziuall diouz kement tra a c'hell displijout d'ezan. Setu aze ar guir doare da ober ar beden a galoun: komz ouz Doue gant ar fizians en deuz eur c'hrouadur en he dad.

AR C'HENTA DEVEZ HA TREGONT A VIZ MEURS

An den eüruz Amedee a Zavoa

(1435-1472)

Amedee a oa mab da Lois, eil euz an hano, ha da Anna, merc'h roue Chypr. He vam, leun a zoujanz Doue, a lakeaz anezan abred da gaout heuz ouz kement a c'hell displijout da Zoue; hen ive, evit senti outi, ha dere'hel neat sae ven he vadiziant, a veze aketuz da dostât ouz ar zakramanchou. Karet a rea dreist oll choum pell da sonjal e Pasion Hor Zalver Jesus-Christ, hag he galoun a veze ken tenereat epad an amzer-ze, ma veze guelet aliez an daelou o koueza euz he zaoulagad.

Dimezi a reaz da vere'h Roue ar Franz, met e leac'h tremen he amzer er chase hag er plijadureziou, ec'h implije he vuez o soursial ouz he sujidi, hag o pourvei d'ho ezomou; ne zaleaz ket da veza karet gant an oll evel eun tad.

Bemdez, goude he bedennou diouz ar mintin, ez ea da zelaou an oferen, ha goudeze, d'en em glevet gant he guzulerien evit guelet petra c'houlenne ar beorien, an intanvezed hag an dud reuzeudik. Rei a rea da bep hini ar pezh en doa guir da gaout, heb ober gaou ouz ar re all.

Ker braz e oa he garantez evit an dud paour, ma vije bet lavaret ne zonje nemet enno; he vrasa plijadur a oa beza oc'h entent outo, hag o ranna d'ezo an aluzen. La-kât a reaz sevel hospitaliou evitho, ha staga a reaz kalz leve ouz an hospitaliou-ze.

An duk vertuzuz-man a goueze avechou e drouk-sant: met e leac'h en em glem euz ar c'hlenved-se, e tigemere anezan evel eur c'hras euz an env: « Netra, emezan, n'eo » talvoudusoc'h d'an den var an oad eget ar c'hlenved, » sikour a ra anezan da drec'hi he ioulou fall, en » eur renta c'houero plijadureziou ar bed. »

En he glenved diveza e lakeaz digas en he gambr an Dukez hag an aotrounez vrasa euz he balez, hag e komzaz outo evelhen: « Bezit sonj euz ar beorien; d'eoc'h » eo da gemeret soursi anezo; diskouezit ho karantez » en ho c'henver en eur rei da bep hini ar pez en deuz » guir da gaout, ha grit ma vezo servichet mad an Aotrou Doue. »

Prestik goude e resevaz ar gommunion e viatik, hag heb gouzanv poan vraz ebet, e varvaz d'an unan ha tregont a viz meurz 1472, d'an oad a zeiz vloaz ha tregont.

He zantelez a oa anavezet gant an oll, hag an eskibien divardro en em c'houlenne ha lavaret a dliet oferen an anaoun evitan; arc'heskop Tarentes a lavaraz e oa guelloc'h hen ober, p'eo guir an Iliz her goulen evit pep den.

Prest goude he varo, Doue a ziskleriaz santelez he zervicher dre eun niver braz a vuzudou. Eskop Verseil a gomz euz c'houec'h-ugent, kaer meurbed, c'hoarvezet ar peb brasa anezo e kenver tud hag a goueze e drouk-sant. Ar pab Innosant XI en deuz roet kounje d'ober eun ofiz en honor d'an den eüruz-man, e Stadou an duk a Zavoa.

SONJOMP ERVAD :

Kalz tud a glask beza henoret hag anavezet gant ar re all, ober a reont zoken kalz dispignou er guel euz a gement-se, ha peurvuia ne reer nemet ober goap anezo. An den eüruz-man a zo bet doujet ha karet gant he bobl, epad he vuez hag ive goude he varo; penaoz eo deut da veza henoret evelse gant an oll? dre he vuez santel hag e garantez evit ar beorien. Peur e teuimp-ni da entent kement-se, ha da gemeret skouer divar ar zent?



AR C'HENTA DEVEZ A VIZ EBREL

SANT HUG, ESKOP

Ar zant-man a oa ganet e kichen kear Valens en Dauphine. He dud a oa a renk huel. He dad, hanvet Odilon, a ziskouezaz, meur a vech, er brezellou, pegen braz e oa he nerz kaloun; bez' e oa ouspenn-ze eun den devot meurbet. D'an oad a zaouzek vloaz ha tri-ugent, ee'h en em dennaz en eur gouent evit lakât he ene e stad da vont dirak he Grouer. Epad trivac'h vloaz e vevaz eno er binijen, hag er beden; neuze en devoue ar joa da reseo he zakramanchou diveza digant he vab, eskop dija e Grenobl: mervel a reaz etre divrec'h he vab santel.

He vam, choumet er gear gant ar vugale all, a veve ive en he zi evel eul leanez en he c'houent, o rei he c'halloun d'ar zantelez hag he amzer d'ar geledadurez kristen, ha d'an oberou mad. Bez' e oa skouer ar gragez kristen. Pa gouezaz klanv, e c'houlennaz he mab da zont d'he guelet. An eskop santel a zeuaz da rei d'ezi he zakramanchou diveza, hag ar vam a reaz etre divrec'h he mab, maro eur zantez.

Sant Hug a oa choumet en he iaouankiz dinam evel eun eal, ober a reaz he studi da veza beleg, ha da c'houde e oue kemeret da zekretour gant kannad ar Pab. Eun deiz, e kear Avignon, e teuaz, euz Grenobl, beleien ha tud a Iliz d'he c'houlenn da eskop. An den santel en devoue poan o kredi e kinniget eur garg ken huel d'ezan ha n'en doa, var he veno, na gouiziegez, na santelez aoualc'h evit kement-se. Klask a rea digareziou, met kannad ar Pab a roaz urz d'ezan da zenti, ha da vont da Roum evit beza sakret gant ar Pab Gregor VII.

Pa zeuaz d'he eskopti e oue rannet he galoun: an

dachen en doa da labourat a oa griet gant al louzeier fall. Poania a reaz, hag ober a reaz d'eur maread tud beva e guir gristenien.

Eun nozvez, Doue a ziskouezaz d'ezan dre he gousk, seiz stereden gaer o kerzet dirazan betek eul leac'h distro hanvet Chartreus. Nebeut amzer goude, seiz den, sant Bruno hag he c'houec'h koumpagnoun, a zeuaz da c'houlen digantan aotre ha plas da vont da ober ho ermitach: sant Hug, p'ho guelaz, a zonzaz er seiz stereden, hag a iez he-unan ganto betek ar Chartreus. Savet e oue eno, dioc'htu, kenta kouent sant Bruno hag ar Chartreuzed; an eskop santel en em voazaz buan da vont di aliez. Epad ma veze gant ar venec'h, e c'heulie ar reolen evel an distera anezo. Ar vuez kalet-se a reaz d'ezan beza treac'h da dentasionou an drouk-spered, ha sevel hueloc'h var hent ar zantelez, rak-se ive pa zistroe d'he di, an eskop santel a gendale'he da ren ar memez buez gant ar Chartreuzed: iun a rea bemdez. Ouspenn-ze, dispign a rea an nebeuta ma c'helle evit he voued, he zillad, he arrebeuri, evit kaout muioc'h da rei d'ar beorien. Ker modest e oa en he zellou, ma lavarar ne joumaz morse da zellet ouz maouez ebet, epad an hanter-kant vloaz ma oue eskop.

Meur a vech an eskop santel a glaskaz rei he zilez a eskop, met ar Pab a lavare nan; choum a reaz e penn he eskopti Grenobl epad hanter kant vloaz. En he glenved diveza, en doa bepred dirak he zaoulagad he grusif hag imach ar Vere'hez Vari; pa zeue da voredi e oa aoualc'h lavaret dirazan an hano santel a Jesus hag a Vari evit ober d'ezan dihuna.

Araok mervel en devoue sonj euz ar beorien, rak rei a reaz d'ezo kement tra a vije kavet var he lere'h. Mervel a reaz, er bloaz 1132.

SONJOMP ERVAD :

Tad ha mam sant Hug o deuz bet an heur vad da velet ho mab, deut neuze da veza eskop, o tont da rei d'ezo ho sakramanchou diveza; maro int etre he zivreac'h. Na pegen eüruz eo, da bred ar maro, enn tad hag eur vam hag o deuz

roet ho mab da Zoue. Lavaret a c'hellont: « Doue a raio eun » digemer mad d'eomp, abalamour d'ar mab beleg-se. Ouspenn-ze, ha pa zeufe ar re all d'hon dilezel, goude hor » maro, ar mab-se en devezo sonj ac'hanomp, en he oferen. » Ia, eüruz oump! »

AN EIL DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Fransez a Baol

(1416-1507)

Ar zant-man a oa ginidik euz ar gear a Baol er C'halabr, en Itali. Ez vihanik, e leac'h tremen he amzer o c'hoari gant ar vugale euz he oad, e veze guelet o choum a gostez evit lavaret he bedennou. Iaouank flam e oa c'hoaz, pa 'z eaz da veva en eul leac'h distro var ar meaz, evit ober pinijen ha ren eur vuez santel.

Ar vrud euz he zantelez a iez buan dre ar c'harter tro-var-dro, ha prestik e oue guelet tud o tont d'he gaout, da c'houlen beza digemeret en he goumpagnunez, evit deski gantan penaoz bale var hent ar zilvidigez. Abarz nemeur e oue red d'ezan sevel eur gouent evit gellout kaout lojeiz d'an oll; ha neuze e sonjaz rei d'ezo eur reolen evit ho zikour d'en em zantelât. Evel-se e oue savet Urz santel an Tadou hanvet Minimet, da lavaret eo, an Tadou bian, an Tadou distera etouez ar re all. Ober a reant veu da zioueret ar c'hig hag al leaz, hag ouspenn e thient ober pinijennou rust ha kalet.

Roue ar Frans, Louis, unnekved euz an hano, a oa dalc'het d'ar mare-ze gant eur c'hlenved, ha ne gave louzou ebet d'he barea. Pa glevaz komz euz santelez Fransez a Baol, hag euz ar burzudou a rea, e c'hoanteaz he velet, hag e reaz he bedi da zont betek ennan.

Epad he vech evit dont er Frans, Fransez a reaz meur a vuzud. An dud a zirede var an hent, gant ar

vall o doa d'he velet; kammad ar Pab ne vije ket bet great kement a honor d'ezan evel d'ar zant-man, pa zigouezaz e kear Napl. E Roum, ar Pab hen digemeras evel pa vije bet eun eal euz an env. Pa dremenaz dre gear Borm, er Provans, an dud a oa klany eno gant ar vosen, en em gavaz pare raktal, hag ar c'hlenved spéguz-se a ieaz kuit euz ar vro. Er Frans, an holl a gemere anezan evit eun den o tont a berz Doue. Ar Roue hag he zervicherien a ziredaz da zigemeret anezan, mont a rejont d'he ziambrouk var an hent. Louis XI en em lakeaz d'an daoulin dirazan, o pedi anezan, d'her para ha da asten d'ezan he vuez.

Ar zant, sklerijennet gant an Aotrou Doue, a respountaz: « Prinz braz ha gallouduz, buez ar rouaned e deuz » he zerimen evel hini ar re all. Great o peuz d'in » dont ama evit asten ho puez, ha Doue am digas » evit ho sikour da gaout eur maro mad. » Betek neuze ar Roue en doa aoun ha spount rak ar maro, met goude beza klevet komzou ar zant, ar spount-se a nijaz divar he spered, kinnig a reaz da Zoue an nemorant euz he vuez: lakât a reaz urz en he goustianz hag en he rouantelez, prestik goude, e varvaz leun a beoc'h, etre divreac'h ar zant.

En despet d'ar stad a oa great anezan, Fransez a Baol a joumaz atao humbl hag izel a galoun.

Guelet a reaz an Urz santel en doa savet oc'h en em asten euz an Itali, betek ar Frans, ar Spagn, hag an Allemagn: pa varvaz, kouenchou an Tadou Minimet a oa stank dre ar bed. Koueza a reaz klanv d'ar zui Bleuniou, ha d'ar iaou Gamblid e c'houlennaz beza kaset d'an iliz. Eno e oue roet d'ezan he zakramanchou diveza, hag antronoz, deiz Guener ar Groaz, e varvaz, en he unnek vloaz ha pevar-ugent, er bloavez 1507.

He gorf a oue laosket var ar varv-skaon en iliz epad unnek devez, hag eur maread tud a zeuaz d'he velet: rag choumet e oa ker fresk ha pa vije bet leun a vuez.

KENTELIOU SANT FRANSEZ A BAOL :

I. — An den a fell d'ezan kaout ar peoc'h hag an eürusted, a dle karet Doue a greiz he galoun.

II. — An hini n'eo ket izel a galoun, ne c'hell ket karet Doue e guirionez, na beza santel.

III. — Na peger braz eo Doue; na peger bihan ha pegen dister eo an den! Met pa velomp Doue en em izeleat kement, pa velomp anezan diskennet e renk an dud, piou a gredo c'hoaz en em fougeal, hag en em zével dreist ar re all?

SONJOMP ERVAD :

Mar fell d'eoc'h plijout da Zoue, eo red d'eoc'h beza izel a galoun e guirionez. Evit kement-se sonjit en ho simpladurez hag en ho pec'hejou, neuze c'houi en em zisprijo hoc'h-unan, hag a gavo nerz da c'houzanv gant pasianted an dismeganz o pezo da c'houzanv avechou.

AN TREDE DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Mari Ejypsianez

Mari Ejyptianez a zilezaz he c'herent en he iaouankiz evit mont da gear Alexandri: eno e renaz eur vuez direol. Eun deiz, o velet eun niver braz a dud o vont da Jerusalem evit ober eur gouel en honor d'ar Groaz-Santel, Mari a ieaz ive en ho c'houmpagnunez. Met pa falvezaz ganti mont en iliz, e oue dalc'het e kichen an or gant eun dourn kuzet; sonjal a reaz: « Va disurziou eo a vir ouzin da velet ar Groaz sakr, » hag e tirollaz da vouela ha da hirvoudi, gant keuz ha gant glac'har d'he fec'hejou.

Guelet a rea imach an Itroun-Varia a ziabell, hag en eur zellet outan, e lavaraz: « O mam leun a drugarez, » sellit a druez ouzin, rag me 'zo brasa pec'herez a zo » er bed. Na veritan ket kaout ar grasou kaer a ro Doue » d'an dud dibec'h, met roit d'in goulskoude ar c'hras » da velet ha da adori ar Groaz santel-ze, p'eo guir ho » mab Jesus en deuz skuillet he c'hoad varni evit

» savetei va ene; ha me lavar d'eoc'h e tilezin ar bed
» evit lenva d'am fec'hejou betek fin va buez. »

Neuze e c'hellaz mont en iliz heb poan ebet, hag ec'h en em daolaz d'an douar dirak ar Groaz sakr en eur skuill kalz daelou. Kovez a reaz eno he fec'hejou, ha pa oue goalc'het he ene e dour zantel ar Binijen, ec'h en em dennaz en eul leac'h distro, pell var ar meaz. Eno, e vevaz epad seiz vloaz ha daou-ugent, kuzet ouz daoulagad an dud, en eur ober piniennou kalet.

N'en em vage koulz lavaret nemet gant grizioù louzou, hag eun deiz, eun ermit hanvet Zozim, o veza eat pell var ar meaz, a gavaz anezi; chom a reaz mantret o velet peger kastiz e oa; lavaret e vije bet ne jome mui nemet ar relegou anezi. Ar zantez, heb ne defe biskoaz guêlet an den-ze araok, a gouezaz d'an daoulin dirazan, hag en eur he c'helver dre he hano, a lavaraz: « Tad » Zozim, roit, me ho ped, ho pennoz d'ar vrasa pec'he- » rez a zo var an douar. »

Diskleria a reaz d'ezan disurzioù he iaouankiz, hag ar poaniou braz e doa bet da c'houzanv, epad ar bloavezioù kenta m'oa en em dennet euz ar bed. « Kollet em euz eneou a ganchou, emezhi, epad seitek vloaz er bed, setu neuze epad ar seitek vloaz kenta a binijen, n'em euz ket saouret an eürusdet a ro Doue, peurliesañ, d'ar re a zo d'ezhan. Met breman, emezhi, va ene a zo en dudi: tregont vloaz so e santan guir garantez Doue o ren em c'halon. — Mil bennoz d'eoc'h, Aotrou Doue, a lavaraz neuze an ermit, pa 'z eo guir e tiskuezit en doare-ze ho karantez d'an oll. »

Ar zantez a bedaz neuze Zozim da zigas he Doue d'ezi d'ar Iaou-Gamblid, var ribl ster ar Jourden; hag an ermit a deuaz d'an deiz merket.

P'e devoue Mari digemeret he Doue, e lavaraz da Zozim, dont adarre kenta ma c'helfe d'he guelet, d'al leac'h m'en doa he c'havet en dro genta. « Eno e vezin, » emezi, er stad ma plijo gant Doue. » Var dro eur bloaz goudeze, an ermit a zistroaz eta d'al leac'h-se: kaout a reaz ar zantez maro. He c'horf astennet var an douar a oa choumet fresk, evel pa vije bet o paouez

tremen; en he c'hichen e kavaz skrivet ar c'homzouman: « Tad Zozim, lakit ama en douar, korf ar bec'he- » rez Mari; marvet oun da zeiz Guener ar Groaz, antro- » noz m'o poa lakeat Doue da zisken em c'haloun. » Zozim a lakeaz ar c'horf en douar: kement-man a c'hoarvezaz vardro ar bloaz 431.

SONJOMP ERVAD :

Mar o peuz c'hoant e guirionez trei kein d'ar pec'hed, pellait diouz ar pez a ra d'eoc'h koueza ennan. Ar zantez-man a oa en em gollet er bed, ha pa zeuz da anaout he fec'hejou, e pelleaz diouz ar bed, evit en em ziouall guelloc'h. Eun ene hag a zo en em roet oll da Zoue, a gavo atao nerz kaloun aoualc'h da enebi ouz an drouk-spered.

AR PEVARE DEVEZ A VIZ EBREL

SANT ISIDOR, ESKOP

Ar zant-man a zo bet ganet ha savet e Karthajen, er Spagn. He vreur kosa, sant Leandr, a gemeraz soursi d'he gentelia, met Isidorik en doa poan o teski. Eun devez ma oa eat var ar meaz, e kavaz e kichen eur puns, eur mean roudennet mad gant ar beradou dour a oa koezet varnan.

Hag ar paotr a zonjaz: « Mar teu eun dra ken dister » hag eur berad dour da gleuz eur mean kalet, perak » ne c'helfen-me ket renka em fenn, a nebeudou, des- » kadurez an dud gouizieñ? » Divar neuze, ne fallgalounaz mui, met staga a reaz d'al labour.

O veza ma lakea he oll volontez vad, Doue her zikouraz; hag heb dale e oue e renk ar baotred iaouank desket brao. He vreur kosa a roaz d'ezhan, da c'houde, kenteliou ar vistri guella ha brudeta a oa d'ar mare-ze er Spagn, setu ma teuaz Isidor da gaout eur vouiziegezh dispar.

Sikour a reaz neuze he vreur, a oa d'an ampoent arc'heskop Sevil, da veza treac'h d'an Arianed: ar re-man a glaske lavaret n'eo ket mab Doue par d'he Dad e peb tra. Isidor a brennaz ho ginou d'ezo: ar virio-
nez a bare sklear en he skridou.

Doue a c'halvaz davetan sant Leandr, arc'heskop Sevil, ha kerkent Isidor a oue tennet euz he gouent, en despet d'ezan, ha tronet e plas he vreur. Ar re a gomz euz labour ar pastor karantezuz ne c'hellont ket meuli aoualc'h he zeskadurez, he vadelez, he zousder: « Bis-koaz, emezo, guelloc'h eskop n'euz bet e nep leac'h. » Sevel a reaz kouenchou braz dre ar Spagn a-bez, evit ma c'helfe an dud iaouank studia an oll skianchou, ha deski var eun dro lezemou ar vouiziegez ha re ar zantelez: rak ar venec'h eo a rea skol en amzer-ze.

O velet ne oa ket eaz d'ar re a iea da veleien studia ar skianchou sakr, e reaz sevel eur skolaeh evito hebken, hag e lakeaz e penn ar studiou ar veleien gouizieka ha santela. Mont a rea he-unan, bep er mare, d'ar skolach-se, evit guelet ha poania a rea ar glouer iaouank da zeski.

Goude beza gouarnet he eskopti epad eiz vloaz ha tregont, Isidor a gouezaz klanv. Pevar devez araok he varo, e reaz he zougen en iliz: reseo a reaz gant devosion ar gommunion zantel, ha da c'houde e c'houlennaz sikour pedennou he bobl, hag e roaz d'an oll he vennoz. Digaset e oue d'an iliz, bemdez da c'houde; eno eo e tremenaz, d'ar 4 a viz ebrél 636 pe 639.

Ar zant-man a zo bet lakeat e renk ar doktored, rak he skridou a zo eur sklerijen gaer evit an dud a Iliz.

DARN EUZ KENTELIOU SANT ISIDOR :

I. — Pedi a netta an ene, lenn a ro sklerijen d'comp; an eil hag egile a zo mad, ar beden evelato a dal an hirra.

II. Poaniou ar c'horf a zo iec'hed an ene.

III. — Ar gasouni a bella euz a Zoue; ne c'hell beza paet na gant ar poaniou, nag ar verzerenti: ne vefe ket goalc'het gant eur ster goad.

IV. — Divar pec'hed bian e sav pec'hed braz, rak an tchou fall a gresk a nebeudou.

V. — Pa vez hano euz al luxur, ar spered eo a vez kountamet da genta, ar c'horf da c'houde hebken.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, p'en em velaz klanv da vad, a reaz he zougen d'an iliz, evit rei d'he bobl he vennoz diveza: n'en doa ket aoun rak ar maro.

Ne gasit ket divar ho spered sonj ar maro evel eur zonz kasaüz, rak mad eo sonjal enni e kreiz ar brasa eüruset ha plijadureziou. Red eo beza var evez, gant aon rak eur maro trum. Mervel a c'hellit er bloaz-man, marteze abarz disul, marteze hirio; ar maro eo a ra an eternite, mad pe fall; diouallomp eta.

Eun den hag en deuz great eur maro fall, ha pa vefe maro gant eur pec'hed marvel hebken, a zo kollet evit atao; ha pa skuilfe he dud eur mor daelou var he vez, o c'houlenn truez evitan, ar mor daelou-ze ne voalc'ho ket ar pec'hed.

AR PEMPED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Visant Ferrier

(1347-1419)

Ar zant-man a oa ganet e Valens e rouantelez Spagn. He vrasa plijadur, p'edo c'hoaz bian, a oa komz gant ar vugale all euz a Zoue hag euz an traou santel; galvet e oa gant Doue da veza eur prezeger braz.

D'an oad a drivac'h vloaz ez eaz da c'houlenn beza digemeret en Urz sant Dominik, resevet e oue dioc'htu, rag an oll a anaveze he zevosion. Neuze an drouk-spered a reaz kement ha ma c'hellaz evit he drec'hi hag he lakât da fallgalouni: klask a reaz touella anezan e peb

doare, hag epad hirr amzer; met Visant, evit dere'hel penn d'ezan, a gendalc'haz ive bepred da bedi ha da ober pinijen. Eun deiz, eur plac'h fall, poulzet gant an diaoul, a ieaz e kampr Visant evit he zougen d'ar pec'hed. An den iaouank a ledaz kerkent glaou beo var leur ar gampr, hag a zaoulinaz varnho en eur lavaret: « Deuz breman em c'hichen, mar kredez dont; goulskoude, emezhan, an tan-man a zo dinerz e kenver tan an ifern. » Ar verc'h-se, spountet, a zirollaz da lenva, hag en em roaz da Zoue.

Pa oue beleget, ar zant a oue karget da brezeg. Sonjal a rea en he brezegennou pa veze daoulinet ehars treid he grusifi, ha goudeze e save ac'hano, he galoun entanet gant karantez Doue; he gomzou a veze neuze ken nerzuz ma lakea tan ar garantez-se e kaloun an oll. Dont a reaz evelse da veza eur prezezer dispar, ha ne zaleaz ket da veza kaset dre ar bed gant he vistri, evel misionner abostolik.

En he vro e roaz he visionou kenta, hag eno e lakeaz eun niver braz a dud da zistrei da Zoue: ac'hano e teuz er Frans. Var a leverer, en deuz gounezet da Zoue pemp mil var n' ugent a Juzevien ha seiz mil a Zarazinet, er Spagn hebken, ha c'hoaz ez euz eun niver braz a dud all, distroet ganthan divar an hent fall, ha n'int ket anavezet.

Prezeg a rea peurliesha, var finvezioù diveza an den, var ar varn dreist oll, rak lezhanvet eo bet abostol ar varn. En leur zisken euz ar gador-brezeg ez ea er gador-govez, ha neuze kalz euz ar bec'herien a veze bet ouz he zelaou a iea d'en em strinka d'an daoulin eharz he dreid, en eur c'houlouen pardoun euz ho fec'hejou.

Epad ar beachou en deuz great er Frans hag er broiou all, Visant Ferrer a viraz atao reolen he Urz; iun a rea bemdez, nemet da zul, hag evit guele ne gemere nemet eur guchen golo.

Goude ma oue bet ar zant braz-man o prezeg an Aviel gant kalz a frouez er Spagn, en Itali, en Allemagn ha betek e Bro-Zaoz, duk Breiz, Ian V, a bedaz anezan da zont en hor bro. Senti a reaz dioc'htu, hag e teuz da

genta d'an Naoned, hag ac'hano, da Vened. Goude beza kelet an dud dre eno, e teuz en eskopti Kemper da genta: prezeg a reaz e Keraez, Kemperle, Konk-Kerne, Pont 'n Abad ha Kemper. Mont a reaz da c'houde da eskopti Leon: prezeg a reaz e Lesneven; er Folgoat e velaz an iliz nevez savet, hag a oue konsakret er bloaz varlerc'h (1419). Ac'hano ez eaz da Gastell-Paol, da Vountroulez, ha da c'houde, d'an eskoptiou all euz Breiz-Izel.

Erfin, ar zant-man, skuizet, ha brevet he gorf gant kement a labourou tenn, a gouezaz klanv e kear Gued; eno eo e varvaz er bloaz 1419, d'he zek vloaz ha tri-ugent. Epad he vuez en doa great ouspenn eiz kant burzud a leverer, ha goude he varo, an niver anezo a ieaz atao var gresk.

SONJOMP ERVAD :

An drouk-spered a glask heb ehana an tu d'hon lakât da bec'hi epad hor buez: poania a ra dreist oll d'hon lakât da goueza er pec'hed vil, rak gouzout a ra pegement a c'hrasou kaer a ro Doue d'ar re a vir ho c'haloun neat euz ar pec'hed-se. Evel ar zant-man, na d'it ket da fallgalouni, mar d'oc'h tentet alies enep ar vertuz-se: met, en eur gemeret skouer varnan, dalc'hit mad d'ar beden, lakit ho fizianz e Doue; neuze, ha pa vijec'h tentet epad hirr amzer, hoc'h ene na vezo ket kaillaret, met kaerât a raio bepred dirak an Aotrou Doue.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Aïbert, Beleg

(1060-1140)

Sant Aïbert a oa mab d'eur zoudard euz ar Flandr. Kaset e oue abred d'ar skol, hag evel m'en doa eur spered lem, e teuz e berr amzer da gaout eun deskadurez vraz. Met he spered hag he galoun a oa troet muioch var draou ar bed all, eget var draou ar bed-

man. He vrasa plijadur a oa lemm al levriou santel, ha sonjal er guirioneziou kaer a gave enno.

Eun deiz, ar paotr iaouank a glevaz hano euz eun ermit, nevez maro evel eur zant, hag en doa great pini-jennou braz epad he vuez. Neuze evit gellout kaout eur maro mad, e c'hoanteaz kemeret skouer divar an ermit-se. Kaout a rea d'ezan e kleve mouez he goustianz ouz he c'helver da vont da zervicha Doue dre ar beden hag ar binijen. Mont a reaz eta heb dale, da c'houlen beza digemeret e koumpagnunez eun ermit all, evit deski gantan beva evel ar zent var an douar, ha ker-kent ec'h en em lakeaz da ren eur vuez ker rust hag hini he vestr. Bemdez e kastizent ho c'horf dre ar iun hag ar binijen, avechou zoken e tremenent eiz devez dioc'h-tu heb tanva ar bara, ha peurvuia ne zrebent nemet grizioù kriz. Epad ar goanv, e kreiz ar skourm hag an erc'h, ne fellaz d'ezo morse en em domma e kichen an tan, tremen a reant ar peb brasa euz ho amzer o pedi, hag o kana meuleudiou an Aotrou Doue.

Bep mintin an ermit a lavare an oferen, hag he ziskibl iaouank a c'helle evel-se daoulina ouz an daol zantel, ha maga bemdez he ene gant bara an elez. En doare-ze, e teuent ho daou da nevezi heb ehan ho nerz, hag e c'hellent kendere'hel ho finijennou kalet.

D'an oad a dri-ugent vloaz, sant Aïbert en em dennaz pelloc'h c'hoaz var ar meaz, he-unan kaer, evit gellout kreski he binijen. Eno ne zrebaz ket a vara na kalz na nebeut, hag evit kastiza he gorf goasa ma c'helle, e choume pell heb eva dour da derri he zec'hed. Beva a reaz gouskoude er stad-se epad ugent vloaz, hag an oll a lavare ne joume beo nemet dre vurzud, rag den all ebet, var a lavarent, n'en dije gallet biken ober eur seurt pinijen.

Brud euz he zantelez a redaz betek eskopti Kambrai, hag an Aotrou 'n Eskop a deuz he-unan da gaout ar zant-man, evit rei d'ezan an Urziou Sakr. Lavaret a reaz an oferen bemdez goudeze, hag eun dudi e oa gullet anezan ouz an aoter: henvel e oa ouz eun eal o komz gant an Aotrou Doue. Kalz tud a deue da c'houlen kuzul

digantan, ha peurliesia e kovesea ar re a deue d'he gaout; goude-ze e roe d'ezo aliou ker fur ha ker santel, ma vezent gullet o tistrei da Zoue, o ren eur vuez nevez, o rei skouer vad en dro d'ezo.

Erfin Aïbert a varvaz evel eur zant, d'an oad a bevar-ugent vloaz, er bloaz 1140.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man o veza klevet komz euz maro santel eun ermit, en em dennaz pell dioc'h ar bed evit gellout kaout ive eur maro eüruz. Ni, pa glevomp Doue o komz ouz hor c'halloun, a dle ive selaou anezan, ha mont d'he servicha el leac'h m'oump galvet gantan. Met mar deo dallet hor spered gant ar pec'hed, penaoz e c'hellimp-ni klevet mouez an Aotrou Doue, penaoz e c'hellimp-ni senti outan?

Choum a reomp souezet o klevet hano euz ar pinijennou braz en deuz great ar zant-man, hen hag en doa gouskoude miret bepred he ene neat diouz peb pec'hed. Leac'h on deuz da veza souezet muioc'h c'hoaz, o velet pegen dister eo hor pinijen, ni hag a zo kouezet er pec'hed ken aliez. Jesus-Christ en deus lavaret eo striz hent an env, abalamour da-ze ar zent o deuz great pinijen; arabad e vefe deomp kredi e ve bet ledaneat an hent evidomp-ni.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ EBREL

An den Eürus Herman

Hermann a oa ganet en Allemagn. Iaouankik e oa c'hoas pa ziskoueze dija eur garantez dispar e kenver Doue hag ar Vere'hez. E leac'h choum da c'hoari e touez ar vugale euz he oad, ec'h en em denne da bedi en eun iliz savet en honor da rouanez an env; eno e veze kavet dalc'h mad, daoulinet dirak imach ar Vere'hez, o komz outi evel ma komz eur c'hrouadur bian ouz he vam.

Doùe hen digollaz euz an honor a rea d'ar Verc'hez Vari, en eur rei d'ezan grasou kaer epad he vuez, ha dreist oll, ar c'hras d'her c'haret atao dreist peb tra, ha da zalc'her neat diouz ar pec'hed sae ven he vadi-ziant. An Itroun Varia he-unan en em ziskouezaz d'ezan meur a vech, ha ne deuz biskoaz he ankounac'heat he en he oll ezomou.

He gerent, paour aoualc'h, n'o doa ket a eaz d'hen lesker pell er skol: met Doue en doa dibabet ar c'hrouadur-ze evitan, hag a c'halvaz anezan en eur gouent euz Urz sant Norbert. Eno e peurehuaz he studi, ha seulvui e kreske he zeskadurez, seulvui e kreske ive he garantez evit Doue. Karet a rea kalz ar pinijennou hag ar poaniou kalet, ha klask a rea an tu da gaout bemdez eur boan nevez benag, rak, evel ma lavare aliez, ar vuezman a dle beza eun amzer a binijen.

Pa lavare Hermann an oferen, e sante he galoun o lamet hag o tridal gant ar joa; he vizach a veze atao kaer ha laouen n'euz fors pegement a nec'hamant en defe bet var he spered araok. Ar c'hlenvejou en doa da c'houzanv, hen lakea da zisprijout he gorf, ha da labourat gant muioc'h a aket evit savetei he ene.

He boaniou hag he anken a greske peurvuia, nebeut amzer araok ar goueliou braz, ha Doue, evit he zigoll, en em blije o rei d'ezan ive da genver ar goueliou-ze, grasou puill ha pinvidik. Neuze e teue d'ezan eun nerz nevez euz an env, ha dre anaoudegez vad, e kreske c'hoaz he bedennou.

Mervel a reaz, er bloaz 1241, hag he ene, goude beza karet kement an Aotrou Doue var an douar, a iez var eün d'ar baradoz, da gemeret perz e gloar an elez hag ar zent.

SONJOMP ERVAD :

Evel an den santel-man, lakit ive ho fizianz er Verc'hez, pa 'z eo guir eo ho mam; goulennit dreizi ar grasou oc'h euz ezom anezo; pa vezoc'h poaniet, savit ho kaloun etrezek enni, rak ne c'hell ket choum heb selaou pedennou he bugale pa deuont d'en em erbedi outi gant fizians. Sonjit er c'homzou-man, a zo bet lavaret ken aliez gant ar zent: « Bugel Mari ne c'hell ket beza kollet. »

An den eüruz Hermann a veze goall gaset muioc'h gant an drouk-spered pa dostea ar goueliou braz, met epad an amzer boaniuz-se e reseve ive grasou krenvoc'h. Enebour hor zilvidigez a zo atao ive var hon tro, met peurlies a kemer muioc'h a boan evit hon lakât da goueza er pec'hed, pa fell deomp pedi, tostât ouz ar zakramanchou, en em rei da Zoue; neuze dreist-oll e tispak he holl ijin evit hon lakât da fall-galouni. Bezomp bepred var evez anezan, dalc'homp penn d'ezan gant sikour Doue, rak seulvui ma poaniomp da enebi ouz ar pec'hed, seul brasoc'h e vezo ive ar grasou on dezo digant Doue. En em droomp neuze varzu ar Verc'hez, hor mam, miret a raio ouzomp da goueza dindan galloud an drouk-spered var an douar, ha da heur ar maro e c'hasteno d'eomp he dourn, evit hor c'has ganti d'ar Baradoz.

AN EIZVED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Hospis, Ermit

Hospis a oa ganet er Frans; p'edo c'hoaz iaouank e kleve komz alies divar-benn ar vuez santel a rene ar venec'h en Ejipt, hag e savaz c'hoant gantan beva evelde. Treuzi a reaz eta ar mor evit deski ganto penaoz bale var hent ar zantelez. Choum a reaz souezet pa velaz ar pinijennou rust, ar iuniou, ar pedennou kalounek a rea eno ar venec'h: tremen a reaz eun nebeut bloaveziou en ho zouez, o c'heuil ar memez reolen hag ar memez buez ganto. Goudeze e tistroaz adarre d'he vro, gant ar volonteiz stard da heuil ar skoueriou mad en doa kavet en Ejipt.

Dont a reaz da jourm er Provans, en eun tour koz, e kichen ar mor, ha dilezet pell a oa. Eno, pell diouz an dud, he spered troet varzu Doue hebken, ec'h en em roaz a greiz kaloun d'ar binijen. Dougen a rea eur gouriz reün hag eur jaden houarn en dro d'he gorf; iun a rea bemdez, hag epad ar c'horaiz, e kreske c'hoaz he binijen.

Eur vech en amzer ec'h en em roe da ober panerou ha traou all, gant brouan, met ar peb brasa euz an deiz hag euz an noz a dremene o sonjal e Doue, hag o pedi.

Doue ne zilezaz ket he zervicher; sklerijenna a reaz he spered var an amzer da zont, ha diskuill a reaz d'ezan ar brezel kriz a dlle beza great er Frans, gant pobl al Lombardi: lavaret a reaz d'ezan an drouk a raje an dud-se var ho hent epad ar brezel. Neuze ar zant a ieaz da lavaret d'an dud divar ar meaz en em denna buan er c'heariou, dastum araok ho zamik peadra, ha kas ganto ho arrebeuri hag ho madou.

Evel m'en doa diskleriet, soudardet digaloun al Lombardi en em daolaz var eul loden euz douar Frans, er bloaz 575, en eur zistruja kement vad a gavent dre ma 'z eant; ho brasa plijadur a oa laerez ar pez a oa mad evito, ha lakât an tan e kement a joume var ho lere'h. Lod anezo a ieaz en tour, e leac'h m'edo sant Hospis o choum, hag o velet he jadennou, her c'hemerjont evit eun torfetour braz benag. Goulen a rejont digantan pe seurt torfed en doa great evit beza chadennet en doare-ze.

« Me, emezan, a zo falla den a zo var an douar. » Neuze unan euz ar zoudarded Lombard a dennaz he gleze, hag her savaz en ear evit faouta d'ezan he benn: met he vreae'h a joumaz sounnet outan, betek ma teuaz ar zant d'ober sin ar groaz varnan. Eur burzud all brasoc'h a c'hoarvezaz, rak ar zoudard-se a deuaz kerkent da zigeri he zaoulagad d'ar feiz kristen; trei a reaz kein d'he vuez a zizurz, hag en em rei a reaz oll da zervich Doue betek he varo, en eur ober piniennou braz. Sant Gregor, eskop Tours, a lavar e veve c'hoaz ar zoudard-se en he amzer.

Erfin, Hospis, goude beza tremenet pemzek vloaz oc'h ober pinijen, a gouezaz klanv; tri devez araok mervel e tennaz ar jaden houarn a zouge bepred en dro d'he gorf, ha var he lere'h e choumaz eur gouli beo, hag a verke skelar peger kalet e oa bet he binijen. Mervei a reaz en eur c'houzanv poaniou braz er bloaz 581; he

ene a oa leun a beoc'h hag a zouder, ha var he dal e velet al laouenedigez o para.

Ober a reaz burzudou kaer araok ha goude he varo.

SONJOMP ERVAD :

« Na varnit ket ha ne viot ket barnet, rak hervez m'o pezo » barnet ar re all, e viot barnet hoc'h-unan », eme Hor Zilver Jesus-Christ. An den a fazi aliez, pa varn he nesa, abalamour ne oar ket petra dremen er galoun. Sant Hospis, o veza m'oa karget a jadennou, a oue kemeret evit eun torfetour pe eur muntre, ha goulskoude e oa eur zant bras.

Livirit bepred en ho spered, eo guelloc'h an dud all evit doc'h, rak ne zonzoc'h biken re a vad anezo. Mar kav d'eoc'h guelet unan benag oc'h ober an drouk, na zisprijit ket anezan, marteze eo divlam dirak Doue; ha pa vefe anat ha sklear d'an oll e ra an drouk, n'eo ket d'eoc'h-hu eo d'he varn, met da Zoue. Ma velit ho preur kouezet en eur pec'hed benag, sonjit o peuz marteze great hoc'h-unan ar pec'hed-se; mar klaskit mad, c'houi gavo oc'h kouezet e re all brasoc'h c'hoaz; mac'h en em zantit direbec'h, ne dit ket d'en em fougeal, met bezit izel a galoun, trugarekait Doue da veza ho tiouallet, o pet truez ouz ho preur, pedit evitan, hag en em ziuallit hoc'h-unan.

AN NAVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Valtrud, Intanvez

Ar zantez-man a zo ganet euz eur ouen dud devot braz, en Austrasii, rak he zad, he mam hag eur c'hoar d'ezhi a zo henoret evel sent gant an Iliz.

Valtrud, kelennet mad, a droaz abred-kaer varzu ar zantelez: selaou a rea gant evez ar c'henteliou leun a furnez a roe d'ezhi he mam, ha poania a rea da heuil ar c'henteliou-ze. Ne anavezaz ar bed hag he blijadure-

ziou, nemet evit ho disprijout; e leac'h darempred an dud iaouank euz he oad, e choume bepred e koumpagnunez he mam; evelse ne velaz nemet skoueriou mad dirak he daoulagad, ha ne glevaz biskoaz an distera komz divalo en dro d'ezi.

Pa deuaz var an oad, he c'herent he aliaz da zimezi gant eun den iaouank fur, hanver Majelder, ha kentoc'h eget ober displijadur d'ezo, e kemeraz anezan da bried. Bez' e devoue pevar grouadur, hag ho fevar int maro evel sent.

Majelder, o velet santelez he bried, hag an eürusted a gawe en devosion, a zantaz he galoun gounezet gant gras Doue; en em glevet a reaz gant Valtrud evit mont en eul leandi, ha ren eur vuez santeloc'h gant ar venec'h. Hi a joumaz c'hoaz daou vloaz en he zi, evit sevel he bugale, hag en em rei d'añ oberou a drugarez. Neuze, an dud a vuez direol en em lakeaz d'ober goap anezi, hag an teodou fall a zavaz bep seurt gevier noazuz divar he fenn. Met Valtrud, e leac'h en em glem ha klask en em zifen, a goueze d'an daoulin eharz treid he c'hrusifi, hag eno e kave bepred nerz aouale'h da c'houzant gant pasianted an dismegans a daolet varni.

Pa oue braz he bugale, e sonjaz ive kuitât ar bed evit en em rei oll da Zoue. Pedit a reaz eun dijentil euz he c'herent da lakât sevel d'ezi eun ti bihan, e leac'h ma c'hellfe beva he-unan, hag ober pinijen. Great e oue eur maner kaer, met hi her c'havaz re vrao eviti, hag a lakeaz ober eun all disteroe'h. Eno, pell diouz trouz ar bed, ee'h en em roaz d'ar binijen: evit trec'hi an ioulou fall euz he c'haloun, e kastize bemdez he c'horf, hag avechou e skuille daelou o sonjal peger braz e oa madelez Doue en he c'henver.

Daoust m'e doa ar zantez nebeud aouale'h a dra, e klaske atao an dro da zikour an dud ezomek. Eun deiz e velaz eun den paour o vont d'ar prizoun, ablamour d'he zle; gant truez outan, hi a c'houlennaz digant ar varnerien paea an dle en he leac'h, met siouaz! pa zeuaz

ar mare, e velaz ne doa ket a beadra aouale'h. Neuze e choumaz nec'het o klask gouzout pe seurt respount d'ober d'ar varnerien, rak a veac'h m'e doa an hanter euz ar pezh a oa ezom. Doue, o velet he bolontez vad, a deuaz neuze d'he sikour, lakat a reaz an arc'hant da greski etre he daouarn, hag evelse e kavaz peadra da baea an dle, ha da zic'hadenna an den paour-ze.

Sevel a reaz buan brud euz he vertuziou, ha prestik e oue gullet kalz mere'hed o tont euz a bep leac'h da c'houlenn beva en he c'houmpagnunez, ha ren ar memez buez ganti. Heb dale, he zi a deuaz da veza evel eur gouent, hag eur blijadur e oa gullet al leanezet all o senti ouz eur vestrez ker santel, hag o kemeret skouer varni.

Goude beza great evelse kalz a vad, ar zantez-man a varvaz er bloaz 686, var dro an oad a dri-ugent vloaz. Doue a ziskouezaz he zantelez dre veur a vuzud, koulz epad he buez evel goude he maro, ha kear Mons e deuz he c'hemeret da Batrounez.

SONJOMP ERVAD :

Santez Valtrud a oa euz eur famill zantel, hag he-unan eo deut da veza eur zantez. Siouaz, ar seurt famillou-ze a zo rouez breman. Deoc'h-hu, tadou ha mamou, eo rei skouer vad d'ho pugale, mar fell deoc'h gullet doujans Doue en ho lignez var ho lerc'h; rak ar vugale peurvuia a gemer skouer var ho zud. N'eo ket red d'eooc'h lakât madou braz etre ho daouarn, ho vertuziou hag ho skoueriou mad a vezo evito an heritach kaera ha talvoudusa evit ar bed all.



AN TRIVECHVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Beuva, Guerc'hez

Ar zantez-man a zeuaz er bed, vardro ar bloaz c'huec'h kant.

Mar deo kaer gullet eun den dister o tilezel ar bed evit en em rei oll da Zoue, kaeroc'h eo c'hoaz, evelato, gullet eun den pinvidig o lavaret kenavezo d'ar bed: setu eno goulskoude ar pezh e deuz great santez Beuva.

Karez tost e oa da roue Frans, Dagobert; madou braz e doa var he hano, met Beuva ne glaske ket an eürused a gaver er bed-man, rag he c'halon a oa treet var ar vertuziou kristen. Savet mad e oa bet gant he zud, hag he brasa plijadur a gave er beden: c'hoant e doa beza da Zoue hebken.

He breur, sant Baudri, o velet he doare ker santel, a reaz sevel eviti e kear Reims, eun ti henvel ouz eur gouent, el leac'h m'en em dennaz Beuva. Kalz merc'hed all, hag a c'hoantea trei kein da oll vragou ar bed, evit servicha Doue eveldi, en em dennaz eno assemblez ganti: he buez santel a oa eur skouer evit tud ar gouent. He oll C'hoarezed he choazaz evit ho zuperio- rez, met evel ma c'houie ervad ez eo didamalloc'h senti eget gouarn, ne falvezaz ganti kemeret ar garg-se, nemet goude m'en devoue sant Baudri diskleriet d'ezi, e oa kement-se bolontez an Aotrou Doue.

Lakât a reaz he oll aked da rei d'he C'hoarezed, en he oll oberoù, ar skouer-vad euz ar vertuziou a c'houlenne diganto: rak he gouarnamant a, oue bepred leun a furnez hag a zousder.

Ken humbl e oa ma kave diez atao ren ar re all, met he humilite zoken a rea d'ezi beza karet ha doujet muioc'h

bet c'hoaz eskop ebet: sakret e oue gant arc'heskop Tour ha pevar eskop all. Neuze roue Frans a gasaz d'ezan eul loden euz ar relegou kaer a oa e Paris. Hogen, eur vech eskop, ar zant a gendalc'haz d'he bini- jennou ha d'he oll bedemou, ho c'hreski a reaz zoken, met poania a reaz ive da viret oll deveriou he garg. Sevel a rea ilizou, gullet a rea he bobl, hag e prezege d'ezan.

A greiz m'oa en he vella o labourat evit silvidigez ar Vretoued, an diaoul a c'houezaz kasouni ha fallagriez en he enep e kalonou eur vanden tud difeiz. Ar re-man a zispennaz he vrud vad hag a glaskaz terri he c'hal- loud. Poania a rejont d'he vresa, d'he flastra dindan ho zreid, da denna memez he vuez digantan. Meur a vech e rojont tro da zant Patern da skuill daelou c'houero, hag e teujont erfin a benn da ober d'ezan rei he zilez a eskop: « Eun all, emezan, a raio muioc'h a vad egedon. »

Mont a reaz neuze er Frans da veva en eun ermitach: eno, he-uman gant Doue, e kavaz ar peoc'h hag al leve- nez, hag ec'h ankounac'heaz fallagriez he enebourien. Mervel a reaz en eur veuli Doue.

Tri bloaz goude maro ar zant, eur zec'hor vraz a rivi- naz bro Guened; sevel a reaz kernez etouez an dud. Neuze Guenediz a zavaz keuz gantho da veza bet digar evit ho eskop koz. Pennou braz kear a ieaz betek relegou sant Patern, hag a c'houlenmaz digas ar relegou-ze ganto da Vened. Hen ober a rejont, ha pa denaz ar re- legou e kear, e oue fin d'ar zec'hor. Eun den pinvidik, bet enebour d'ar zant, a ginnigaz douar evit sevel eun iliz da lakât he relegou sant Patern, hag abaoue ar re- legou-ze a zo bet rentet honor braz d'ezo.

SONJOMP ERVAD :

Sant Patern a ziskouezaz kaout an oll vertuziou. Evel Hior Zalver, e kemere he blijadur oc'h ober vad d'an oll, ha goul- koude e oue kaseat evel eun torfetour. Evel Jesus, hag evel sant Patern, na skuizomp ket ken nebeut oc'h ober vad bepred, ha pa ve dic'hras an dud en hor c'henver da c'houde. Ba- radoz hon euz da gaout.

digantan: dizamma a ra ho c'houstians, ha lakât a ra ar peoc'h en ho ene.

Evel ar zant-man, grit aluzen evit ho pec'hejou hag evit plijout da Zoue, rak da heur ho maro, hoc'h oberou mad a joumo ganeoc'h; neuze e veloc'h int talvoudusoc'h d'eoc'h eget an dispignou o pezo great evit ho plijadur, pe zoken marteze evit offansi Doue...

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Leon Kenta

Sant Leon a zo ganet e Roum, hag eno e reaz he studi abred; desket braz e oue a vianik. Ar Pab sant Selestin e veza klevet hano anezan, her goulennaz da zekretour. E kreiz labourou niveruz ar garg-se, e tiskouezaz buan he furnez; gant he spered lem, e kave atao an tu da zirouestla an traou diesa: ha dont a reaz evel-se da veza anavezet evit he c'houisiegezh dispar. Pa deûaz ar maro d'ar Pab sant Sixt, an oll her goulennaz evit gouarn an Iliz en he leac'h.

O veza m'en doa sikouret, epad pell amzer, ar re a oa bet azezet en he raok var gador sant Per, ar Pab nevez a oue eaz d'ezan en eun doare: anaout a rea h: labour, hag anaout a rea ezomou an Iliz. Nec'het e oa evelato, gouzout a rea e oa kalz disursiou e meur a leac'h, e touez ar gristenien zoken, setu perak e rankaz poania da zie'hrisienna ar gisiou fall a oa en em zilet etouez an dud.

Ar zant-man, tad an oll gristenien, a zislavaraz er he brezegennou an heretiked a veve en he amzer, skriva a reaz ive levriou kaer en ho eneb. Pa velaz e choume hiniennou heb plega d'he lavarou, e reaz boda an dud a Iliz e konsil Kalsedoan, hag e reaz koumdaoni eno ar falz doktored o doa c'hoant touella an denved fiziet ennan gant an Aotrou Doue.

D'ar mare-ze, e saveteaz ive kear Roum euz eur goall darvoud: eur roue kriz ha dinatur, Attila, leshanvet **Goalen Doue**, a oa saillet var an Itali gant he zoudarded. Diskar, devi pe laza a rea kement a gave var he hent; ar spout a rede en he raok, ar rann-galoun var he lere'h. Edo dija demdost da Roum, pa 'z eaz an dud, strafuillet oll, da gaout ho fastor santel: « En han' » Doue, emezo, saveteit ac'hanomp, saveteit hor bugale. » Sant Leon, pastor mad ha karantezuz, mall gantan difen he zenved, a viskaz he zillad kaera, hag a reaz da **Voalen Doue** mont var he giz. « Perak oc'h euz sou- » blet d'ar beleg-se? a c'houlenne digantan he dud. — » Ah! eme Attila, e kichen ar beleg-se e oa eun den » skeduz, eur c'hleze noaz gantan en he zourn; ma » n'em befe ket pleget, e c'hourdrouze skei ganen. » Sant Leon a reaz kana en iliz eun **Te Deum** a drugarez, met nebeut a Romaned a zeuaz d'an iliz: kerkent ha ma oa tremenet ho spout, o doa ankounac'heat e oant dleourien euz ho buez da Zoue.

Doue ho skoaz eun dro all, pa 'z eo guir n'o doa dis- kouezet anaoudegez vad ebet d'ezan er vech kenta. Jenserik a deuaz, eur roue ker kriz hag Attila pe dost, kemeret a reaz Roum. Ar Pab santel a zavaz adarre, goulenn a reaz buez he dud, hag abalamour d'ezan, Jenserik ne skuillaz berad goad ebet, ha ne lakeaz an tan e nep leac'h: he zoudardet a laeraz evelato kement tra a c'heljont da gas ganto.

En amzer ar zant-man, e kouezaz c'hoaz eun dristidigez hag eur baourentez vraz var gear Roum; kernez a oue, hag a veac'h ma kave an dud peadra d'en em vaga, ha d'en em viska. Ar Pab santel a lavaraz d'ezo e oa c'hoarvezet kement-se dre ho faot: « Malloz an » Aotrou Doue, emezan, a zo kouezet varnoc'h; pa ge- » roc'h beva e guir gristenien, trei kein d'ar plijadu- » reziou difennet, hag ober nebeutoc'h a voall zispi- » gnou, c'houi a zeuio adarre da veza ken eüruz hag » araok. »

Erfin, ar Pab braz-man, tad ar beorien, sklerijen ar

anezo ker stard, ha gant kement a zaelou, ma ne c'hel-jont ket nac'h he goulen outhi.

Er gouent e renaz eur vuez ker santel ma oa skouer an oll. Kerkent ha m'e devoue great he veuiou, e oue lakeat da zupierez en eur gouent, nevez savet e Porseno: e'houezek vloaz e oa d'ar mare-ze. Ar garg-man a roaz muioc'h a dro d'ezhi da ziskouez d'he oll leanezed skouer vad e peb tra. He humilite a oue c'hoaz brasoc'h neuze, he finijennou rustoc'h, he c'harantez evit Doue birvidikoc'h, he fedennou hirroc'h. He hast da ober evit gloar Doue ar muia ma c'helle, a oue ker braz, ma kollaz he iec'hed dre he finijennou kalet, ha divar neuze he buez ne oue mui nemet eur c'hlenved ankeniuz, hag a reaz d'ezhi merka sklearoc'h he feiz birvidik. Evit guir, Doue he digolle euz he foaniou, rak e kreiz he merzerenti, e roe d'ezhi eul levenez ker braz, ne c'hell ket beza diskleriet.

Tud euz kear Montepulsiano, o veza klevet kelou euz ar vad a rea Agnez e Porseno, a bedaz anezi da vont da zevel eur gouent nevez en ho c'hear. Daoust ma kare kalz he leanezed, evel m'oa ive karet ganto, ar c'hoant da greski evelse gloar Doue, a reaz d'ezhi senti raktal. Ar gouent a oue savet e berr amzer, ha ker buan e oue karget a vere'hezved vertuzuz, a oue lakeat ganti dindan reolen Urz sant Dominik.

Doue a roaz ive d'ar zantez-man ar gallopd da ober miraklou. Unan euz he leanezed o veza e riskl braz da goll ar guele, kement e teve he daoulagad, Agnez a bedaz eviti, ha ker buan al leanez en em gavaz pare. Kaout a reomp testeni c'hoaz e deuz roet ar guele da veur a zen dall, ar iec'hed da galz tud klanv. Met red eo hen anzaou, euz an oll draou burzuduz-se, souezusa zo eo buez ar zantez he-unan: rak en despet d'he c'hlenved ha d'he oll boaniou, e rea peb tra evel eun den iac'h mad. Er gouent e veze atao er penn-araok; da genta o pedi, da genta d'al labour; kemeret a rea soursi euz peb tra, atao laouen, atao eüruz.

Erfin dinerzet dre he finijennou hag he c'hlenevjeou

e'hoaz gant pep'hini. He galloud a oa ker braz var spe-red he oll C'hoarezed ma c'henillent gant ar brasa evez, an distera aliou a roe d'ezo. Senti a reant outi gant joa: klask a reant evelse dre ho oll oberou diskouez guelloc'h e'hoaz ho doujanz hag ho c'harantez.

Uzet dre he finijennou, evel teuzet dre nerz tan ar garantez birvidik e doa evit he Doue, ar zantez-man, karget a veritou, a iez da reseo en env ar gurumen dleet d'he buez santel, vardro ar bloaz 674.

SONJOMP ERVAD :

An dousder a gave ar zantez-man er beden, hed he iaouankiz, a rea d'ezhi ober fae var plijadureziou ar bed. Kement-se he foulze da zervicha Doue gant muioc'h a galoun: Doue a ro eun tanva euz joa an env, d'an eneou a zervich anezan gant aked. Ententit mad kement-man: eüruzded servicherien Doue a zo kalz brasoc'h eget ar boan a zo o viret he c'hourc'hennou.

Eüruzdet tud ar bed, er c'hontrol, a zo berr, didalvez, ha c'houero atao. Anzavit-hen: daoust ha c'houi oc'h euz biskoaz kavet ar guir joa e kreiz plijadureziou ar bed? Goude m'oc'h bet en em roet d'hoc'h ioulou fall, ha c'houi a zo bet en em gavet eüruz? O va Doue, hen lavaret oc'h euz, ar pec'her a vezo kastizet, ha kastizet gant he bec'hed. Servicherien ar bed a zo sklavourien, pleget atao dindan beac'h ho ioulou fall. Bezit da Zoue, hag ho pezo eur guir beoc'h.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Opportuna

Opportuna, ginidik euz an Normandi, er penn kenta euz an eizved kantved, e doa eun doujanz hag eun devosion vraz evit he eal mad: en em ziskouez a rea alies d'ezhi, en he iaouankiz. Ar vere'h santel, o c'houzout ervad e felle d'he c'herent he dimezi, en em strinkaz d'ho zreid, evit goulen beza leanez: he mennoz a oue roet

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar zantez-man, eviti da veza bet pell klanv, a joume bepred laouen, ha leun a beoc'h. Doue, avechou, a zigas d'eomp ar c'hlenved abalamour m'emaomp e stad a bec'hed: c'hoant en deuz e chenchfemp buez. Avechou all, p'emaomp e stad a c'hras, e ro dre ar c'hlenved, tro d'eomp da greski hor meritou evit ar bed all. Pa viot klanv, sonjit e poaniou Jesus-Christ var ar Groaz; sonjit ez euz c'hoaz tud all hag ho deuz muioc'h a boan evidoc'h, sonjit er memez amzer e maoc'h oc'h ober pinijen er bed-man, evit beza eüruz er baradoz.

Er c'hlenved eo ec'h anavezer an den just diouz an den fall, rak, eme zant Siprian: « An den fall pa deu an dis- » tera tra da stourm outan, a zo prest d'en em glem ha da » vlashemi hano an Aotrou Doue, e leac'h an den just a » c'houzav peb tra gant pasianted. »

II. — Santez Lidwina a c'hounezaz eun den da Zoue, oc'h ober d'ezan sonjal e poaniou an ifern. E pe leac'h ema an den a raffe ar pec'hed, ma karfe sonjal aliez e kementse! Pa viot touellet gant an diaoul, pa glasko ho lakât da goueza er pec'hed, sonjit neuze e tan an ifern, c'houezet evit ar bec'herien, ha c'houi a vezo treac'h d'ho tentasionou, hag a joumo fidel da Zoue.

III. — Ar zantez-man a zivoaskaz poan epad eiz vloaz ha tregont, heb en em glem; ped kristen, goude ma vezint choumet eiz dez hebken en ho guele, a damallo an Aotrou Doue da veza re rust evito!

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Hermenejild, Merzer

Hermenejild, mab da roue ar Visigoted, a oa en he iaouankiz, heretik evel he dad: met dre ma teue var an oad, e kave d'ezan n'edo ket var an hent mad. Mont a rea, bep tro ma c'helle, da zelaou ar prezegennou a rea sant Leandr, eskop Seville, hag eun deiz, p'edo ouz he

zelaou, e santaz gras Doue o sklerijenna he spered, hag o tigeri he zaoulagad d'ar guir feiz. Nebeut amzer goude, pa n'edo ket he dad er gear, e troaz kein d'ar relijion faoz, hag e c'houennaz beza digemeret en Iliz Jesus-Christ, a vel d'an oll.

He dad, pa glevaz an dra-ze, a ieaz en egar: er penn kenta e komzaz ouz he vab gant dousder, o sonjal e teufe buanoc'h d'he c'hounit, met pa velaz ne c'helle ket dont abenn anezan, e reaz tenna diganta he oll vadou, hag he daoler er prizoun.

Hermenejild na gollaz ket he nerz kaloun evit klevet ar zetanz-se: lavaret a reaz d'he dad en dije atao karantez evitan, hag en dije bepred sonj anezan en he bedennou, memez er prizoun. Lavaret a reaz ouспен: « Koll va madou n'eo netra, gant na gollin ket ar feiz » katholik. »

Avechou an drouk-spered a deue, dre gomzou flour, da glask distrei anezan, met neuze ec'h en em lakea da bedi euz a greiz he galoun, evit goulenn ar c'hras da zalc'her mad d'he feiz.

He dad a gasaz eur mignoun d'he gaout euz he bers, evit klask he c'hounit adarre: met ar zant a joumaz bepred stard, ha lavaret a reaz zoken ar c'homzou-man d'an den a glaske he douella: « Me n'oun ket evit karet » an heretiked, ha na c'hellan ket mont a du ganto; me » a zo kristen, ha kristen e fell d'in choum, kousto » pe gousto. » Pa oue kaset ar respount-se d'ar roue, an tad dinatur a ieaz kement a zrouk ennan, ma roaz urz d'eur zoudard da vont var an heur da lamet he vuez digant he vab.

Hermenejild a zonje e vije kounnaret he dad hag e vije goest zoken d'hen lakât d'ar maro; setu perak e oa kouezet d'an daoulin en he brizoun evit pedi, ha kinnig he vuez da Zoue, mar bije red. Ar soudard a zigouezaz p'edo c'hoaz daoulinet, ha gant eun taol bouc'hal e faoutaz d'ezan he benn: ar zant a gouezaz maromik var an taol, merzer evit he feiz. He verzerenti a c'hoarvezaz er bloaz 586.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Soter, Pab ha Merzer

Ar zant-man a zo ginidik euz a gear Fondi, e rouantelezh Napl. Meulet eo bet, dreist-oll, evit he garantez hag he aluzennou, ha iaouank e oa c'hoaz pa deuz da joum da Roum. Eno an oll a anzave e oa eur zant, her selaou a reant evel eur prophet, ha goude maro sant Aniset, e oue choazet evit kemeret he garg. Bet eo an trizekved pab goude sant Per.

Ar brezel spountuz a reaz d'ar mare-ze an impalaer Mark-Aurel d'ar gristenien, a roaz tro d'ezan da ziskouez ar garantez tener en devoa evit ar gristenien a oa o choum, ken e Roum, ken er broiou pella euz an douar. Rak n'eo ket e Roum hebken e reat brezel d'ar gristenien met e kement bro a oa er bed. Darn anezo a veze taolet er prizoniou, ha karget a jadennou, darn all a veze barnet da labourat er mengleuziou, heb tam ehan ebet, ha netra koulz lavaret da zebri; lod a veze lakeat d'ar maro e kreiz ar poaniou krisa. Setu eno stad truezuz ar gristenien epad m'edo sant Soter o c'houarn an Iliz.

Ar pastor santel a bourvee guella ma c'helle da oll ezomou he vugale, koulz da ezomou ho ene, evel da ezomou ho c'horf.

Dastum a rea kalz a aluzennou evit ho c'has ama hag ahont, el leac'h ma veze brasa an dienez. Kas a rea d'ar gristenien liziri leun a c'hlac'har evit ho c'hemmerza en ho feiz, ho alia da c'houzanv a galoun vad ho foaniou, dre garantez evit Jesus-Christ.

Mar kemere kement a dregas hag a boan gant ar gristenien a oa er broiou pella, pebez truez n'en devoa ket ouz ar re a oa er boan e Roum zoken, dindan he zaoulagad!

kriz, Agnez a rentaz, gant levez, he ene dinam d'he C'hrouer, er bloaz 1317, d'he daou-ugent vloaz.

Daou vloaz hag hanter kant divezatoc'h, e veve e Sienn santez Katell, gloar Urz sant Dominik, ha Doue a ziskleriaz d'ezi e vije er baradoz skoaz ha skoaz gant Agnez a Vontepulsiano. Pebez sked a dle kaout an diou zantez-se! Divar neuze, Katell a ieaz aliez da bardouna da vez santez Agnez, da bokat d'he c'horf pur, choumet fresk ha kaer, evel pa vije beo.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ma vefe an oll vugale kelennet ha desket mad abred, kalz anezo a ve fur ha direbech kaer en ho iaouankiz. Ar zantez-man, d'an oad a 16 vloaz, a oa ker vertuzuz, ma oue lakeat da vestrez ha da zupiorez en eur gouent. N'eo ket ar bloaveziou eo a ro atao furnez ha vertuz. E peb oad e c'heller beza fur, p'en em roer d'ar mad, pa labourer evit beza santel.

II. — Ar zupiorez santel-man, beac'hiet goulskoude gant klenvejou poaniuz, a rea peb tra gant eun ear laouen ha seder, a gomze ouz peb hini en eun doare dous. Kement-se a deue euz ar garantez a verve en he c'haloun evit an nesa. En hor c'hlenvejou, ha beza on deuz-ni ar memez pasianted, hag ar memez dousder e kenver tud hon ti? Pa zigouez eun drouk benag ganeomp, eun nec'hamant benag, pe pa stourm eun dra benag ouzimp, daoust ha na vezomp ket kasañ evit ar re a zo en dro d'eomp, heb gellout rei respount vad da zen ebet? Kement-se a ziskouez d'eomp pegen nebeut a hasianted on deuz.



Unan euz ar re genta prizouniet a oue Justin: e Roum edo neuze o choum. Pa oue digaset dirak ar gouarner, heman a c'houlennaz digantan: « E pe leac'h ez a ar » gristenien da bedi? » E leac'h diskuill ar re a veze kanet an offisou en ho zi, ar merzer a respountaz: « Ni » a bed Doue e peb leac'h. Doue ar gristenien a zo » brasoc'h eget an env hag an douar, rak-se e c'hellomp » he bedi gant fizians, n'euz fors e pe leac'h e vezomp. » — Me a fell d'in gouzout, eme ar barnar, e pe leac'h » e vezit oll asamblez. — Va zi, eme Justin, a zo tostik » ac'haleñ; kavet oun bet eaz gant ar re a glaske ar » virionez, hag a zeue da c'houlen kuzul. — Kristen » out eta? — Ia, kristen oun. »

Ar re a oa gant ar zant a respountaz evel dan; koun-daonet e ouent oll d'ar maro. Skourjezet e ouent da genta; dibennet e ouent da c'houde, er bloaz 167. Ar gristenien a enterraz ho c'horfou gant devosion.

SONJOMP ERVAD :

Nag a boan a gemer lod euz ar re a zo nevez gounezet d'ar feiz, evit sklerijenna ho breudeur choumet en denvalljen! Mez a reont d'ar re a zo bet badezet a vianik. Daoust ha poania a reomp da sklerijenna hon nesa? Ma n'oc'h ket galvet gant Doue da vont da brezeg var ar blasen, daoust hag ober a rit katekiz d'ho pugale, en ho ti? Daoust ha dastum a rit en dro d'eoc'h ar vugale geiz ne gavont den da gemeret soursi anezo, da ober katekiz d'ezo?



AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Ar P. E. Bernadett Soubiros

(1844-1879)

Bernadett Soubiros, hanvet divezatoc'h ar Sœur Mari-Bernard, a zo ganet d'ar 7 a viz genver 1844, en eur vilin hag a oa neuze, koulz hag hirio c'hoaz, e kear Lourd. He zud a ieas da baour gant an amzer, rak eiz krouadur o deus bet, setu ne c'hasjont ket alies ho merc'h kosa d'ar skol; houman a joume er gear da ziouall he breudeur ha c'hoarezed bian, epad ma 'z ea an tad hag ar vam da labourat dioc'h an deiz, pa gavent implij.

D'he fevarzek vloaz, Bernadett ne doa great pask ebet c'hoaz, ne oa bet nemeur er c'hatekiz nak e Lourd, nak e Bartres, e leac'h ma oa bet eun nebeudik miziou o tiouall an derved var ar meaz. Ar vere'hik dizesk-se, bian d'he oad, a blije evelato da Zoue ha d'ar Vere'hez, abalamour ma oa pur en he buez, hag eün en he lavarou.

Guelet a reas ar Vere'hez, evit ar vech kenta, d'an 11 a viz c'houevrer 1858, evel m'eo bet diskleriet e Buez ar Zent, e koulz ar miz-se.

Ar Vere'hez a zeskas da Vernadett ober mad sin ar groaz. Eur c'halz tud, boaz marteze da goves ha da gommunia eur vech en amzer, a ra gant ho dourn eun ormid benag hag a zo sin ar groaz var ho meno, met Bernadett, kenteliet gant ar Vere'hez, a zeskas hen ober mad, ker mad zoken ma veze eaz he anaout etouez kalz tud, dre he doare parfet d'ober anezhan kaer.

An Itroun Varia a zeskas da Vernadett tri zra e kuzul, tri zra ha n'int bet diskleriet da zen gant ar plac'h santel; diskouez a reaz d'ezhi e pe leac'h e thie toulla,

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Fidel a Zigmaringen, Merzer

(1577-1622)

Ar zant-man, hanvet Mark keit ha ma choumaz er bed, a zo ganet er bloaz 1577, e kear Sigmaringen, er Pruss. He dud a oa euz eul lignez huel ha pinvidik: Mark a oue skoliet mad, hag a 'z eaz da alvokad.

Labourat a reaz e Kolmar, en Alsas, ha dizale en devoue brud da veza gouziiek. O veza m'oa eur c'hristen euz ar re vella, e poanie da zifen he gaoz heb dispen he nesa. Karet a rea dreist oll difen kaoz ar beorien; he gomzou a oa ker sklear, ma c'houneze peurliesa kaloun ar varnerien: ar gounid a veze d'an dud difennet gantan.

Guelet a reaz buan ne'o ket eaz difen eun den tamallet e faoz, ma na sklabezer, kalz pe nebeut, he enebour, hag ez eo diez d'eun alvokad chom heb lavaret, bep er mare, traou ha n'int ket guir aoualc'h. Gant aon eta da goll he ene, Mark a daolaz he zae a alvokad, hag a ieaz d'eur gouent euz a Urz sant Fransez: eno e oue hanvet Fidel: pemp bloaz ha tregont e oa.

Eun den e karg, hag en deuz lavaret kenavezo d'ar bed, en em ro peurlies a galoun vad da Zeue: Fidel a boaniaz da veza treac'h d'ar re all dre he zentidigez hag he bedennoù entanet. Met an diaoul n'en doa ket kollet he roudou.

Dont a reaz d'he denti, lavaret a reaz d'ezan: « *Eur* » taol sot oc'h euz great o tont er gouent-man, ma ve- » fae'h choumet er bed, c'houi o pefe sikouret an dud » vad da joum fur, da viret lezennoù Doue hag ar vro, » difennet o pefe an dud paour hag ezomek; gant ho » tanvez, e pefe sikouret an dud reuzeudik; e leac'h,

Guelet e veze ar pab santel, uzet gant an oad hag he labourou, o vont da glask he Vugale er c'havarniou. el leac'hioù toulet dindan an douar evit ho c'hennerza dre he gomzou, hag ho zikour dre he aluzennoù. Setu eno da viana ar pezh a lennomp el lizer skrivet, d'ar mare-ze, gant sant Denys, eskop Korinth, da bobl Roum. Den na deue da c'houlenn sikour digantan, d'en em erbedi outan, heb kaout eur skoazell benag.

Ar pab karantezuz-man a c'houarnaz an Iliz, epad tri bloaz, unnek miz ha trivec'h devez. Eur vuez ker pur, ker santel, kel leun a oberou mad, ne c'helle ket chom heb kaout kurunen ar verzerenti. E peb korn euz an douar e veze lakeat kristenien d'ar maro, ar pab, ar penn, na c'helle ket gortoz kaeroc'h rekoumpans. Merzeriet e oue var dro ar bloaz 176.

SONJOMP ERVAD :

Na pegement a boan o deuz bet da c'houzanv ar gristenien, er penn-kenta euz an Iliz! Goulskoude gouzanv o deuz great ar poaniou-ze gant levez, gant eürusdet. Perak? Gouzout a reant eo berr ar vuez-man, hag eo dudiu an eürusdet a bado da viken en env. Ra zeuio da viana ar skouer a roont, da ober d'eomp gouzanv gant pasianted ar poaniou a zigouez ive ganeomp-ni.

Ar pezh a c'hellomp da c'houzanv er bed-man a zo nebeud a dra e kenver an eürusdet a zo miret d'eomp en env. Hor buez n'eo netra e kenver an eternite, a zo hon lod er bed all. Pa z'eo hor buez ker berr, hor poaniou ne c'hellont ket heza hir. Ar fizianz hon euz da gaout perz e madou ar bed all eo e deuz roet nerz d'ar verzerien da drec'hi ar poaniou ar re grisa, hi eo e deuz great d'ar zent kaout ho foaniou dous, ho finijennou skanv.

Sonjomp alies en env, eno ema hor bro, hor c'hear, rak ama, var an douar-man, ne raimp nemet tremen.

Nag a bed a zo bet en hor raok el leac'h m'emaomp; tremenet int, ni a dremeno ive; var hon lerc'h e teuio re all hag a dremeno ive d'ho zro. Met da ziuall on deuz; an eternite a vezo dioc'h ma vezo bet ar vuez: eternite eüruz evit ar re o dezo poaniet da zervicha Doue; eternite a boan evit ar re all.

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Patern, Eskop

Ar zant-man a deuaz er bed var douar Breiz-Izel. He dad hag he vam, tud a renk huel ha kristeniñ vad, pa oue ganet ho mab, en em glevaz ho daou d'en em zispartia evit en em rei da Zoue. An tad en em dennaz en Irland, hag ar vam, choumet er gear, a gemeraz soursi da zevel he bugel hervez Doue. He gas a reaz, da c'houde, d'ar skoliou. Patern, dre ma kreske en oad, a greske ive e skiant hag e furnez; eun deiz, he vam a lavaraz d'ezan e oa he dad en eur gouent en Irland, hag ar mab a lavaraz kerent: « Ne oufen ober guelloc'h » eget kemeret skouer varnan, rak aoun am euz ne » c'helfen ket ober va zilvidigez e kreiz va oll danvez; hag ec'h en em dennaz e kouent sant Jildas e Rhuys.

Eno o poaniaz da vont var zantelât. Pedi a rea Doue a vir galoun, dispen a rea he gorf a daoliou fouet betek ar goad, beilla a rea striz var he oll skianchou evit kloza dor he galoun oc'h ar pec'hed, ha gant gras Doue e teuaz da veza santel.

Neuze e reaz he zonzj da vont da enez Vreiz: eno e oue lakeat abars nemeur da Abad en he gouent. Mont a reaz larkoc'h da zevel eur gouent all, hanvet abaoue kouent Land-Patern Veur. Da c'houde ez eaz d'an Irland betek ar gouent ma oa enni he dad, choñm a reaz gantan eur pennad amzer, hag e teuaz a benn da lakât ar peoc'h etre daou roue a oa brezel etrezo.

Goude beza bet eur pennad all e Bro-Zaoz, Patern a zistroaz er Frans.

Dont a reaz da Baris, hag ar roue o velet he furnez, he skiant, he zantelez a reaz kement a istim anezan m'hel lakeaz etouez ar re a oa da dosta d'ezan. Er bloaz 465 e oue assamblet eur c'honsil e Guened; eno e oue hanvet Patern da Eskop Guened, e leac'h ne oa

bet c'hoaz eskop ebet: sakret e oue gant arc'heskop Tour ha pevar eskop all. Neuze roue Frans a gasaz d'ezan eul loden euz ar relegou kaer a oa e Paris. Hogen, eur vech eskop, ar zant a gendalc'haz d'he biniñennou ha d'he oll bedennou, ho c'hreski a reaz zoken, met poania a reaz ive da viret oll deveriou he garg. Sevel a rea ilizou, gullet a rea he bobl, hag e prezege d'ezan.

A greiz m'oa en he vella o labourat evit silvidigez ar Vretouned, an diaoul a c'houezaz kasouni ha fallagriez en he enep e kalonou eur vanden tud difeiz. Ar re-man a zispennaz he vrud vad hag a glaskaz terri he c'hal-loud. Poania a rejont d'he vresa, d'he flastra dindan ho zreid, da denna memez he vuez digantan. Meur a vech e rojont tro da zant Patern da skuill daelou c'houero, hag e teujont erfin a benn da ober d'ezan rei he zilez a eskop: « Eun all, emezan, a raio muioc'h a vad egedon. »

Mont a reaz neuze er Frans da veva en eun ermitach: eno, he-unan gant Doue, e kavaz ar peoc'h hag al levenez, hag ec'h ankounac'heaz fallagriez he enebourien. Mervel a reaz en eur veuli Doue.

Tri bloaz goude maro ar zant, eur zec'hor vraz a rivinaz bro Guened; sevel a reaz kernez etouez an dud. Neuze Guenediz a zavaz keuz gantho da veza bet digar evit ho eskop koz. Pennou braz kear a ieaz betek relegou sant Patern, hag a c'houlennaz digas ar relegou-ze ganto da Vened. Hen ober a rejont, ha pa deuaz ar relegou e kear, e oue fin d'ar zec'hor. Eun den pinvidik, bet enebour d'ar zant, a ginnigaz douar evit sevel eun iliz da lakât he relegou sant Patern, hag abaoue ar relegou-ze a zo bet rentet henor braz d'ezo.

SONJOMP ERVAD :

Sant Patern a ziskouezaz kaout an oll vertuziou. Evel Hor Zalver, e kemere he blijadur oc'h ober vad d'an oll, ha goulskoude e oue kasseat evel eun torfetour. Evel Jesus, hag evel sant Patern, na skuizomp ket ken nebeut oc'h ober vad bepred, ha pa ve dic'hras an dud en hor c'henver da c'houde. Baradoz hon euz da gaout.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Sant Aniset, Pab ha Merzer

Sant Aniset a oa ginidik euz ar Syrii. Ma oue brudet abred evit he spered lem, hag he anaoudegez dudiuz euz ar Skritur Zakr, an oll a anzave e oa ive unan euz ar veleien santela euz kear Roum. Eur vouiziegez ker kaer, eur zantelez ker braz a reaz ma oue dibabet evit gouarn an Iliz, goude maro ha merzerenti ar pab sant Pi.

D'ar mare-ze, e guirionez, an Iliz e devoa ezom braz euz eur pastor desket ha santel. Heretiked niveruz ha leun a lore'h, a oa en em zavet eneb d'ezi, e tu ar Zao-Heol, ha betek e kear Roum zoken. Met ar pastor mad-man, var bouez evesât ha beilla bepred, a zeuaz buan d'ho anaout: dizelei a reaz sklear dirak an oll peger fallakr e oa ho e'heleennadurez. Dre he brezegennou hag he genteliou, leun a zouder hag a nerz, e reaz euz a bobl Roum, eur bobl ker santel, ma oa eur skouer vad evit an oll gristenien divar dro.

Sant Hejesip, eur Juseo, gounezet d'ar guir feiz, ha deut da jourm d'ar mare-ze e kear Roum, a roaz dre he furnez hag he vouiziegez kalz skoazel d'ar pab santel. Sant Hejesip he-unan, eo en deuz kountet d'eomp an oll draou-ze el levriou kaer en deuz skrivet, divarbenn amzer genta an Iliz.

Sant Polykarp ha sant Justin, ho daou desket braz hag helavar, a deuaz en amzer-ze ive da Roum, evit sikour ar Pab santel, ha dislavaret an heretiked dre ho e'homzou hag ho skridou.

Doae en doa e'hoant, marvad, konsoli ha kennerza sant Aniset, o lakât ar sperejou brasa a oa neuze er bed da zigouezout assamblez en he gichen. Rei a rejont d'e-

zan kalz sikour e kreiz an oll drubuillou ha poaniou en doa da e'houzanv.

Etouez an niver braz a lezennou a reaz Sant Aniset evit an dud a Iliz, unan a e'houre'hemenne d'ezo dougen bepret ar gurunen pe **donsuren** var ho fenn. Eur skrivaniar koz a lavare eo sant Per ar e'henta a roaz leac'h d'al lezen-ze, e memor euz kurunen sperm Hor Zalver Jesus-Christ. Hervez peb doare, sant Aniset na reaz e kement-man, nemet goulen ma vije miret en amzer da zont, en eun doare strisoc'h, ar pezh a oa gour-e'hemenne dija gant eul lezen deut da veza laosk meurbed.

Ar Pab santel a e'hoantea a bell amzer, skuill he e'hoad evit gloar Jesus-Christ. Doue a zelaouaz anezan: merzeriet e oue, dre urz an impalaer Mark-Aurel, er bloas 168.

He gorf a zo bet tennet euz ar bez, dre aotre ar pab Clement VIII, er bloaz 1604, hag eun iliz a zo bet savet e Roum evit he zigemeret.

SONJOMP ERVAD :

Sant Aniset a e'hoantea, pell amzer a oa, skuill he e'hoad evit Jesus-Christ: e guirionez achui a reaz he vuez dre ar verzerenti. Ar e'haera rekoumpanz a ro Doue er bed-man d'ar re o deuz he zervichet mad, eo rei d'ezo tro da e'houzanv kalz evitan, da rei zoken ho buez evit he e'hloar. Ha e'houi? daoust hag entetet oc'h euz mad ar virionez-man? daoust ha sonjet oc'h euz mad enni?

Ha laouen e vez ho kaloun pa vez red d'eoc'h gouzanv eun dra benag evit Doue? Henez eo goulskoude merk ar guir garantez. Dre ar pezh a lavar d'eoc'h ho kaloun var ar poent-man, e e'hellit guelet petra dal ho karantez, e e'hellit anaout ha e'houi oc'h euz, kalz pe nebeut a garantez evit Doue; e e'hellit gouzout ha bez' oc'h euz ar guir garantez a e'houlen Doue digant an oll gristenien.



AN TRIVECHVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Beuva, Guerc'hez

Ar zantez-man a zeuaz er bed, vardro ar bloaz e'huac'h kant.

Mar deo kaer gullet eun den dister o tilezel ar bed evit en em rei oll da Zoue, kaeroc'h eo e'hoaz, evelato, gullet eun den pinvidig o lavaret kenavezo d'ar bed: setu eno goulskoude ar pezh e deuz great santez Beuva.

Karez tost e oa da roue Frans, Dagobert; madou braz e doa var he hano, met Beuva ne glaske ket an eürused a gaver er bed-man, rag he e'halon a oa troet var ar vertuziou kristen. Savet mad e oa bet gant he zud, hag he brasa plijadur a gave er beden: e'hoant e doa beza da Zoue hebken.

He breur, sant Baudri, o velet he doare ker santel, a reaz sevel eviti e kear Reims, eun ti henvel ouz eur gouent, el leac'h m'en em dennaz Beuva. Kalz merc'hed all, hag a e'hoantea trei kein da oll vraoigou ar bed, evit servicha Doue eveldi, en em dennaz eno asamblez ganti: he buez santel a oa eur skouer evit tud ar gouent. He oll C'hoarezed he choazaz evit ho superio- rez, met evel ma e'houie ervad ez eo didamalloc'h senti eget gouarn, ne falvezaz ganti kemeret ar garg-se, nemet goude m'en devoue sant Baudri diskleriet d'ezi, e oa kement-se bolontez an Aotrou Doue.

Lakât a reaz he oll aked da rei d'he C'hoarezed, en he oll oberou, ar skouer-vad euz ar vertuziou a e'houlenne diganto: rak he gouarnamant a oue bepred leun a furnez hag a zouder.

Ken humbl e oa ma kave diez atao ren ar re all, met he humilite zoken a rea d'ezi beza karet ha doujet muioc'h

e'hoaz gant pep hini. He galloud a oa ker braz var spe- red he oll C'hoarezed ma e'heillent gant ar brasa evez, an distera aliou a roe d'ezo. Senti a reant outi gant joa: klask a reant evelse dre ho oll oberou diskouez guel- loc'h e'hoaz ho doujanz hag ho e'harantez.

Uzet dre he finijennou, evel teuzet dre nerz tan ar garantez birvidik e doa evit he Doue, ar zantez-man, karget a veritou, a iez da reseo en env ar gurunen dleet d'he buez santel, vardro ar bloaz 674.

SONJOMP ERVAD :

An dousder a gave ar zantez-man er beden, hed he iaouan- kiz, a rea d'ezi ober fae var plijadureziou ar bed. Kement-se he foulze da zervicha Doue gant muioc'h a galoun: Doue a ro eun tanva euz joa an env, d'an eneo a zervich anezan gant aked. Entetit mad kement-man: eüruzded serviche- rien Doue a zo kalz brasoc'h eget ar boan a zo o viret he e'hourc'hemennou.

Eüruzdet tud ar bed, er e'hontrol, a zo berr, didalvez, ha e'houero atao. Anzavit-hen: daoust ha e'houi oc'h euz biskoaz kavet ar guir joa e kreiz plijadureziou ar bed? Goude m'oc'h bet en em roet d'hoc'h ioulou fall, ha e'houi a zo bet en em gavet eüruz? O va Doue, hen lavaret oc'h euz, ar pec'her a vezo kastizet, ha kastizet gant he bec'hed. Servicherien ar bed a zo sklavourien, pleget atao dindan beac'h ho ioulou fall. Bezit da Zoue, hag ho pezo eur guir beoc'h.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Opportuna

Opportuna, ginidik euz an Normandi, er penn kenta euz an eizved kantved, e doa eun doujans hag eun devo- sion vraz evit he eal mad: en em ziskouez a rea alies d'ezi, en he iaouankiz. Ar vere'h santel, o e'houzout er- vad e felle d'he e'herent he dimezi, en em strinkaz d'ho zreid, evit goulenn beza leanez: he mennoz a oue roet

d'ezi. En em denna a reaz raktal en eur gouent, hag he breur, sant Godgran, eskop Seez, a roaz d'ezi goel al leanezed.

Eur vech seur, e oue ken devot, ma oa skouer an oll. Pa zeuaz ar maro d'an abadez, al leanezed all he lakeaz, koulz lavaret en despet dezi, da gemeret ar garg a zupérieurez. Divar neuze e kreskaz c'hoaz he finijennou: iun a rea bemdez; ne doa ken guele nemet an douar noaz pe ar plench. Petra benag ma oa ker rust en he c'henver he-unan, e oa leun a zouzder hag a vadelez e kenver he C'hoarezed. Pa vanke unan benag euz he leanezed d'he dever, an abadez santel a bede Doue eviti, evit ma plijfe gantan rei d'ezi ar c'hras da anaout he faot, ha da veza guelloc'h en amzer da zont. He feden a veze, koulz lavaret atao, selaouet gant Doue. Pa veze red d'ezi difazia pe c'hourdrouz unan benag, her grea gant eur garantez ker braz, na c'helle den herzel ouz he c'homzou.

Ar brasa plijadur a gave var an douar-man, a oa sellet ouz an env. Ar zonzj euz gloar hag eüruzded ar zent er baradoz, a veze dalc'hmad var he spered. Meur a vech bemdez, e lavare komzou sant Augustin: « Jeru- » salem an env, palez santel Doue, na pegement ho » karan! Na dudiuz eo d'am spered sonjal alies en ho » kened. »

Erfin, goude beza, epad he c'hlenved diveza, pedet hag aspedet he leanezed da gaout atao ar brasa karantez an eil evit eben, e velaz santez Sesil ha santez Lusie oc'h en em ziskouez d'ezi: « Deuit buan, emezo, da ren » er baradoz ganeomp; ar Verc'hez Vari hag he Mab » benniget a zo var c'hed ac'hanoc'h. » Prest goude, al leanez santel a velas an diaoul, dindan furm eul loan heuzuz, en eur c'houn euz he c'hampr. Kennerzet gant ar zonzj euz an diou zantez, Opportuna a lavaraz: « Choum aze, spered fallakr, te eo tad ar pec'hed, » choum aze, m'her goure'hemen d'id. »

An diaoul a zentaz, met he zaoulagad a zeve, ha flam-mou tann a zilamme euz he c'hinou. Ar zupérieurez a

reaz gervel he leanezed, hag a lavaraz d'ezo: « Guelet » a rit aze enebour hoc'h eneou. Gant gras Jesus- » Christ, me a zo bet treac'h d'ezan, c'houi, va bugale » ger, na zelaouit biken anezan ken nebeut. » Neuze e troaz varzu an diaoul: « En hano an Aotrou Doue, kerz » kuit ac'han. »

Eun nebeut deveziou goude, e tremenaz, e miz ebrél euz ar bloaz 770.

SONJOMP ERVAD :

Ar zupérieurez santel-man, pur ha karantezuz, pa vele unan benag euz ar re a oa dindanni, o vankout d'he dever, en em lakea da bedi Doue eviti; ha dre he fedennou e rea guelloc'h eget n'e devije great dre gomzou pe dre c'hourdrouzou. Na kaera doare evit kelen ar re all! Pedit Doue da genta evito, ha goude, ho c'helen gant dousder ha gant karantez, dre gaer atao. En doare-ze e c'hounez kalounou an oll, hag e lakeer anezo da zistrei var an hent mad; e leac'h ar gourdrouzou great dre vuanegez a zeu alies da hegasi ar sperejou, ha da voasât an drouk.

Ar zantez-man a zelle alies ouz an env, hag he spered a veze en dudi pa zonzje er c'hloar hag en eürusted en deuz promettet Doue d'ar re a gar anezan. Pegen dister ha didalvez e kaver madou ha plijadureziou an douar, pa zonzjer gant evez er plijadureziou hag er madou a bado da viken en env!

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Agnez, Leanez

(1277-1317)

Ar zantez-man, ganet en Toskaan er bloaz 1277, a oa devot evel eun eal a-vianik: he zud, pinvidik braz, a roaz d'ezi abred eun deskadurez kristen. Ne devoa c'hoaz nemet nao bloaz pa ziskleriaz d'he zad ha d'he mam ar c'hoant e doa da vont da leanez. Pedit a reaz

anezo ker stard, ha gant kement a zaelou, ma ne c'hel-jont ket nac'h he goulou outi.

Er gouent e renaz eur vuez ker santel ma oa skouer an oll. Kerkent ha m'e devoue great he veuiou, e oue lakeat da zupierez en eur gouent, nevez savet e Porseno: c'houezek vloaz e oa d'ar mare-ze. Ar garg-man a roaz muioc'h a dro d'ezhi da ziskouez d'he oll leanezed skouer vad e peb tra. He humilite a oue c'hoaz brasoc'h neuze, he finijennou rustoc'h, he c'harantez evit Doue birvidikoc'h, he fedennou hirroc'h. He hast da ober evit gloar Doue ar muia ma c'helle, a oue ker braz, ma kollaz he iec'hed dre he finijennou kalet, ha divar neuze he buez ne oue mui nemet eur c'hlenved ankeniuz, hag a reaz d'ezhi merka sklearoc'h he feiz birvidik. Evit guir, Doue he digolle euz he foaniou, rak e kreiz he merzerenti, e roe d'ezhi eul levez ker braz, ne c'hell ket beza diskleriet.

Tud euz kear Montepulsiano, o veza klevet kelou euz ar vad a reaz Agnez e Porseno, a bedaz anezi da vont da zevel eur gouent nevez en ho c'hear. Daoust ma kare kalz he leanezed, evel m'oa ive karet ganto, ar c'hoant da greski evelse gloar Doue, a reaz d'ezhi senti raktal. Ar gouent a oue savet e berr amzer, ha ker buzn e oue karget a vere'hezad vertuzuz, a oue lakeat ganti dindan reolen Urz sant Dominik.

Doue a roaz ive d'ar zantez-man ar galloud da ober miraklou. Unan euz he leanezed o veza e riskl braz da goll ar guele, kement e teve he daoulagad, Agnez a bedaz eviti, ha ker buan al leanez en em gavaz pare. Kaout a reomp testeni c'hoaz e deuz roet ar guele da veur a zen dall, ar iec'hed da galz tud klanv. Met red eo hen anza, euz an oll draou burzduz-se, souezusa zo eo buez ar zantez he-unan: rak en despet d'he c'hlenved ha d'he oll boaniou, e reaz peb tra evel eun den iac'h mad. Er gouent e veze atao er penn-araok; da genta o pedi, da genta d'al labour; kemeret a reaz soursi euz peb tra, atao laouen, atao eüruz.

Erfin dinerzet dre he finijennou hag he c'hlenvejou

kriz, Agnez a rentaz, gant levez, he ene dinam d'he C'hrouer, er bloaz 1317, d'he daou-ugent vloaz.

Daou vloaz hag hanter kant divezatoc'h, e veve e Sienn santez Katell, gloar Urz sant Dominik, ha Doue a ziskleriaz d'ezhi e vije er baradoz skoaz ha skoaz gant Agnez a Vontepulsiano. Pebez sked a dle kaout an diou zantez-se! Divar neuze, Katell a iez aliez da bardouna da vez santez Agnez, da boket d'he c'horf pur, choumet fresk ha kaer, evel pa vije beo.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ma vefe an oll vugale kelennet ha desket mad abred, kalz anezo a ve fur ha direbec'h kaer en ho iaouankiz. Ar zantez-man, d'an oad a 16 vloaz, a oa ker vertuzuz, ma oue lakeat da vestrez ha da zupierez en eur gouent. N'eo ket ar bloaveziou eo a ro atao furnez ha vertuz. E peb oad e c'heller beza fur, p'en em roer d'ar mad, pa labourer evit beza santel.

II. — Ar zupierez santel-man, beac'hiet goulskoude gant klenvejou poaniuz, a reaz peb tra gant eun ear laouen ha seder, a gomze ouz peb hini en eun doare dous. Kement-se a deue euz ar garantez a verve en he c'haloun evit an nesa. En hor c'hlenvejou, ha beza on deuz-ni ar memez pasianted, hag ar memez dousder e kenver tud hon ti? Pa zigouez eun drouk benag ganeomp, eun nec'hamant benag, pe pa stourm eun dra benag ouzimp, daoust ha na vezomp ket kasaüz evit ar re a zo en dro d'eomp, heb gellout rei respout vad da zen ebet? Kement-se a ziskouez d'eomp pegen nebeut a basianted on deuz.



AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Anselm, Doktor

(1033-1109)

Sant Anselm a zo ganet er Piemont, er bloaz 1033. He dud, a renk huel, a oa pinvidik meurbed euz a vadou an douar, met ive, tud a zoujanz Doue e oant. Skoueriou mad he vam eo a boulzaz dreist oll Anselm varzu Doue. Da heul ar gelennadurez kristen roet d'ezan abred, e oue keletmet c'hoaz var skianchou ar bed. N'en devoa nemet penzek vloaz pa c'houlennaz mont d'ar gouent, hag hep dale, e viskaz sae ar relijiuzed en abati ar Bek, en Normandi, a oa brudet braz d'ar mare-ze. Ren a reaz eno eur vez santel ha skoueriuz meurbed: en em gastiza a rea dreist oll en dibri hag en eva.

Evel ma oa speredet mad, en doa c'hoant braz da vont larkoc'h atao gant he studi, ha brasoc'h c'hoant c'hoaz da zével hueloc'h atao var hent ar zantelez. Dont a reaz, e guirionez, da gaout eur vouisiegez hag eur zantelez dispar, karget e oue zoken da c'houarn ar gouent, hag hen iaouank c'hoaz. Hiniennou euz ar venec'h a oue braz ganto, da genta, beza renet gant Anselm, dre ma oa er gouent kalz re all kosoc'h evitan, met ar zant a zeuaz heb dale da c'hounit ho spered hag ho c'halou, dre he zousder, he humilite hag he basianted. En doare-ze eo e teuaz da veza karet ha doujet gant an oll. Lakât a reaz ar peoc'h, an unani hag ar garantez etouez he venec'h, rei a reaz c'hoant d'ezo da dizout oll hueloc'h c'hoaz er zantelez.

Ar vrud euz a zevosion ha gouiziegez Anselm a iez ker pell, ma oa henoret, n'eo ket hebken gant an eskibien, met ive gant ar pab Gregor VII. Skriva a reaz d'ezan liziri leun a deneridigez, evit erbedi outan an Iliz a-bez.

O veza bet great arc'heskop Kantorbery e Bro-Zaoz, e lakeaz eun urz kaer e-touez he bobl, ken dre he brezegennou santel ha nerzuz, ken dre he zouzder. Ober a reaz ive d'ar mare-ze kalz a leoriou: kaout a reer enno eur vouisiegez dispar, rak ar zant a zo bet diskleriet doktor gant an Iliz.

Epad he gleyved diveza, e reaz he zougen bemdez d'an iliz evit klevet an oferen, ha pa zantaz e tostea ar maro, e reaz lenn dirazan Pasion Hôr Zalver.

Mervel a eure er bloaz 1109, d'he 76 vloaz.

KENTELIOU SANT ANSELM

I. — Evel koustians ar re fall ne ehan d'ho c'hignat e peb leac'h, koustians ar re vad a ra atao ho brasa eürused.

II. — An nep ne laka ket he boan evit en em santellât muioc'h-mui bemdez, ne zaleo ket da vont var he giz.

III. — An den ourgouilluz a ra stad dirak ar re all euz he oberou mad; e leac'h an den santel a joum sioul, a guz zoken he oberou mad, muia ma c'hell da viana.

IV. — An den a gemer ourgouill, var zigarez m'en deuz bet digant Doue grasou puill, a zo fall: seulvui oc'h euz grasou, seulvui e tleit beza humbl.

V. — Ar drouk-spered o tont da denti an eneo santel, a vir outo d'en em zével gant an ourgouill, rak seulvui int tentet, seulvui eo red d'ezo anzaio int dinerz: ha Doue, neuze, ho c'har muioc'h.

SONJOMP ERVAD :

Dre zousder e teuer kentoc'h a-benn euz eun dra eget dre vuaneged: sant Anselm her gouie ervad. En amzer m'edo superior euz he gouent, e lakeaz, en doare-ze, ar peoc'h etouez he venec'h. En amzer m'edo arc'heskop eo dre zousder e c'hounezaz kalonou an oll, eo e teuaz a-benn da lakât an urz vad da ren e peb tra. Ha c'houi, mistri a zo kalet avechou (lod ac'hanoc'h da viana), e kenver an dud a zo dindannoc'h, ha sonjal a rit-hu ez int tud kement ha c'houi? ha sonjal a rit-hu er pec'hed a rit oc'h ho lakât evelse da gaout marteze kasouni ouzoc'h?

Mar deo red d'eur mestr en eun tiegez, beza dous ha karentezuz e kenver he zervicherien, pegement muioc'h c'hoaz a garantez a dle da gaout evit he vugale, hag he bried!

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Soter, Pab ha Merzer

Ar zant-man a zo ginidik euz a gear Fondi, e rouantelez Napl. Meulet eo bet, dreist-oll, evit he garantez hag he aluzennou, ha iaouank e oa c'hoaz pa deuz da joum da Roum. Eno an oll a anzave e oa eur zant, her selaou a reant evel eur prophet, ha goude maro sant Aniset, e oue choazet evit kemeret he garg. Bet eo an trizekved pab goude sant Per.

Ar brezel spountuz a reaz d'ar mare-ze an impalaer Mark-Aurel d'ar gristenien, a roaz tro d'ezan da ziskouez ar garantez tener en devoa evit ar gristenien a oa o choum, ken e Roum, ken er broiou pella euz an douar. Rak n'eo ket e Roum hebken e reat brezel d'ar gristenien met e kement bro a oa er bed. Darn anezo a veze taolet er prizoniou, ha karget a jadennou, darn all a veze barnet da labourat er mengleuziou, heb tam ehan ebet, ha netra koulz lavaret da zebri; lod a veze lakeat d'ar maro e kreiz ar poaniou krisa. Setu eno stad truezuz ar gristenien epad m'edo sant Soter o c'houarn an Iliz.

Ar pastor santel a bourvee guella ma c'helle da oll ezomou he vugale, koulz da ezomou ho ene, evel da ezomou ho c'horf.

Dastum a rea kalz a aluzennou evit ho c'has ama hag ahont, el leac'h ma veze brasa an dienez. Kas a rea d'ar gristenien liziri leun a c'hlac'har evit ho c'hennerza en ho feiz, ho alia da c'houzanv a galoun vad ho foaniou, dre garantez evit Jesus-Christ.

Mar kemere kement a dregas hag a boan gant ar gristenien a oa er broiou pella, pebez truez n'en devoa ket ouz ar re a oa er boan e Roum zoken, dindan he zaoulagad!

Guelet e veze ar pab santel, uzet gant an oad hag he labourou, o vont da glask he Vugale er c'havarniou, el leac'hiou toulet dindan an douar evit ho c'hennerza dre he gomzou, hag ho zikour dre he aluzennou. Setu eno da viana ar pez a lennomp el lizer skrivet, d'ar mare-ze, gant sant Denys, eskop Korinth, da bobl Roum. Den na deue da c'houlen sikour digantan, d'en em erbedi outan, heb kaout eur skoazell benag.

Ar pab karantezuz-man a c'houarnaz an Iliz, epad tri bloaz, unnek miz ha trivec'h devez. Eur vuez ker pur, ker santel, kel leun a oberou mad, ne c'helle ket choum heb kaout kurunen ar verzerenti. E peb korn euz an douar e veze lakeat kristenien d'ar maro, ar pab, ar penn, na c'helle ket gortoz kaeroc'h rekoumpans. Merzeriet e oue var dro ar bloaz 176.

SONJOMP ERVAD :

Na pegement a boan o deuz bet da c'houzanv ar gristenien, er penn-kenta euz an Iliz! Goulskoude gouzanv o deuz great ar poaniou-ze gant levenez, gant eürusdet. Perak? Gouzout a reant eo berr ar vuez-man, hag eo dudiuz an eürusdet a bado da viken en env. Ra zeuio da viana ar skouer a roont, da ober d'eomp gouzanv gant pasianted ar poaniou a zigouez ive ganeomp-ni.

Ar pez a c'hellomp da c'houzanv er bed-man a zo nebeud a dra e kenver an eürusdet a zo miret d'eomp en env. Hor buez n'eo netra e kenver an eternite, a zo hon lod er bed all. Pa z'eo hor buez ker berr, hor poaniou ne c'hellont ket heza hir. Ar fizianz hon euz da gaout perz e madou ar bed all eo e deuz roet nerz d'ar verzerien da drec'hi ar poaniou ar re grisa, hi eo e deuz great d'ar zent kaout ho foaniou dous, ho finijennou skanv.

Sonjomp alies en env, eno ema hor bro, hor c'hear, rak ama, var an douar-man, ne raimp nemet tremen.

Nag a bed a zo bet en hor raok el leac'h m'emaomp; tremenet int, ni a dremeno ive; var hon lerc'h e teuio re all hag a dremeno ive d'ho zro. Met da ziuall on deuz; an eternite a vezo dioc'h ma vezo bet ar vuez: eternite eüruz evit ar re o dezo poaniet da zervicha Doue; eternite a boan evit ar re all.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Jorj, Merzer

Ar zant-man a zo ganet er C'happados. He gerent, tud a renk huél ha pinvidik braz, a lakeaz rei d'ezan abred eur gelemadurez vad ha kristen.

Iaouank e oa e'hoaz pa e'houlennaz mont da heul arme an impalaer Dioklesian. Dre he furnez hag he vouisiegez, e e'hounezaz heb dale istim ha karantez an impalaer-ze; dont a reaz zoken da veza unan euz he offiserien vrasa. Met Jorj ne jomaz ket pell en henoriou, rak Dioklesian a oa paian. Eum deiz, o veza galvet en-dro dezan he oll offiserien, e tiskleriaz d'ezo ar e'hoant en doa da lakât d'ar maro an oll gristenien euz he rouantelez. Peger spoutuz ha pegen fallakr bennag e oa ar mennoz-se, nikun na gredaz dislavaret an impalaer, kalz anezo zoken, evit beza deuet mañ d'ezan, a veulaz anezan euz a gement-se.

Ne oue nemet unan, sant Jorj, hag a gredaz difen kaoz ar gristenien. Heb damant ebet, e tiskleriaz a vouez huél e oa eum dra enep peb guir ha peb lealdet lakât evelse d'ar maro tud didamall, ha direbech var bep tra.

O klevet ar e'homzou-ze, an impalaer a ieaz en egar. Rei a reaz urz raktal da lakât er prizoun ar e'hristen kalounek deut da veza evelse difemour hag alvokad he genvreudeur. Tenn e kave goulskoude koll eum offiser ker mad, ken nerzuz, hag en doa roet d'ezan betek neuze ken aliez a desteni euz he furnez hag euz he vouisiegez. Ober a reaz guella ma e'hellaz evit he e'hounit dre gaer, met en aner. Jorj a zalc'he stard d'he feiz. Neuze an impalaer a roaz urz d'hen lakât e kreiz eur

rod guisket a ziabarz gant begou tachou lem, gant drein dir: korf noaz ar merzer a oue dispennet oll pa oue troet ar rod. An nerz kaloun hag al levenez a ziskoueze an offiser e kreiz he boaniou a e'hounezaz d'ar guir feiz, eun niver braz a baianed. O velet neuze na e'helje ket dont a-benn d'ober da Jorj nac'h he feiz, an impalaer a reaz he zibenna.

He verzerenti a zigouezaz d'an 23 a yiz ebreil euz ar bloaz 303. Sant Jorj a zo unan euz sent patrouned an dud a vrezel, abalamour m'eo bet atao eur zoudard dispoint, hag eur e'hristen stard en he feiz.

SONJOMP ERVAD :

An impalaer Dioklesian a ziskleriaz d'he offiserien ar mennoz fallakr en doa da lakât d'ar maro, oll gristenien he rouantelez. An darn vuia anezo na glaskent nemet plijout d'an impalaer ha beza deut mad d'ezan, a asantaz gantan dioc'htu.

Met sant Jorj, heb aoun rak den, abalamour na zouje nemet Doue, a zifennaz betek ar maro, kaoz ar gristenien. Ha e'hoji, ha difen oc'h euz great ar virionez, an dud ezomek, ken aliez guech ha m'oc'h bet e tro d'hen ober?

Pa velit tud paour goasket ha mac'het, na zeuit-hu ket dre aoun ha dre zempladurez, da zével gant ar re vraz, an dud gallouduz? Nag a dud a zo displeal er poent-man, ha n'o deuz nec'hamant ebet gant kement-se, siouaz d'ezo!

Evit lavaret sklearoc'h an traou, var eun dra, ar re a zo oc'h ingala ar e'hargou, ar guiriou, an aluzennou, pansion ar re goz, ha dibec'h aoualc'h int oll? Guelet a reer aliez kalz displealdet, e diazez an taillou, hag er rollou; kement-se a verk sklear aoualc'h ez eus hiniennou hag a ra gaou ouz ho nesa.

An diazeourien a dle lakât evez na e'hellont ket dizamma unan evit samma eun all, heb ober gaou ouz heman. Ma kavont e oa diazezet fall an traou er bloaz diagent, n'eo ket eun digarez evit ho lezel er stad m'o deuz ho e'havet. Red eo d'ezo lakât urz e kement-se, en eur rei he gount a dailou da bep hini, hervez he zanvez hag he e'halloud.

En eur ger, an neb a zo o tiazeza an taillou na dle sellet nag ouz kar, nag ouz enebour: ha ma ra eun displealdet benag, e tle rapari.

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Fidel a Zigmaringen, Merzer

(1577-1622)

Ar zant-man, hanvet Mark keit ha ma choumaz er bed, a zo ganet er bloaz 1577, e kear Sigmaringen, er Pruss. He dud a oa euz eul lignez huel ha pinvidik: Mark a oue skoliet mad, hag a 'z eaz da alvokad.

Labourat a reaz e Kolmar, en Alsas, ha dizale en devoue brud da veza gouiziek. O veza m'oa eur c'hris-ten euz ar re vella, e poanie da zifen he gaoz heb dispen he nesa. Karet a rea dreist oll difen kaoz ar beorien; he gomzou a oa ker sklear, ma c'houneze peurlieska- loun ar varmerien: ar gounid a veze d'an dud difennet gantan.

Guelet a reaz buan ne'o ket eaz difen eun den tamallet e faoz, ma na sklabezer, kalz pe nebeut, he enebour, hag ez eo diez d'eun alvokad choum heb lavaret, bep er mare, traou ha n'int ket guir aoualc'h. Gant aon eta da goll he ene, Mark a daolaz he zae a alvokad, hag a ieaz d'eur gouent euz a Urz sant Fransez: eno e oue hanvet Fidel: pemp bloaz ha tregont e oa.

Eun den e karg, hag en deuz lavaret kenavezo d'ar bed, en em ro peurlieska a galoun vad da Zoue: Fidel a boaniaz da veza treac'h d'ar re all dre he zentidigez hag he bedennou entanet. Met an diaoul n'en doa ket kollet he roudou.

Dont a reaz d'he denti, lavaret a reaz d'ezan: « Eun » taol sot oc'h euz great o tont er gouent-man, ma ve- » fac'h choumet er bed, c'houi o pefe sikouret an dud » vad da joum fur, da viret lezennou Doue hag ar vro, » difennet o pefe an dud paour hag ezomek; gant ho » tanvez, e pefe sikouret an dud reuzeudik; e leac'h

» ama, er gouent-man, na c'helloc'h biken ober netra » nemet pedi Doue. An dra-ze n'eo ket eur vicher eo, » ne rit vad ebet d'ar re all. Deut oc'h ama var zigarez » ober ho silvidigez, met daoust hag an oll dud a zo er » bed a vezo daonet? Tud ar bed, koulz hag ar venec'h, » a c'hell gounit er baradoz eur gurunen, ha ker kaer » kurunen hag ar venec'h santela. » Ar zonzezonou-ze, ha kalz a re all, a ruille hag a ziruille e spered ar manac'h iaouank: nec'het maro e teuz da veza.

Eun den, ha pa vefe doktor var an oll lezennou, evel ma oa Fidel, a zo diez d'ezan, guechennou, kaout skleri- jen evitan he-unan: ar manac'h a c'houlennaz eun ali digant mestr an novised. Heman, goude beza pedet Doue, a lavaraz: « An diaoul eo a zo o klask druilla ho » spered. Kasit anezan divar ho tro dre ar beden. » Sklerijennet, ar manac'h iaouank a c'houlennaz digant Doue ober penn-da-benn he volontez santel; neuze, evit merka d'ar bed e rea fae varnan evit atao, e verzaz ke- ment en doa, hag e roaz ar peb brasa euz an arc'hant, evit sikour paotred iaouank da vont da veleien.

Divar neuze, ar manac'h devot a ieaz buan var araok en hent ar zantelez. Ne gavaz morse e vije eur guiska- mant re zister, eur binijen re galet, eur plas re izel evitan. Gant an dra-ze, ne baouez da bedi ar Vere'hez gloriuz Vari, ha da c'houlou sikour diganti.

D'ar mare-ze, mistri ar zant, o velet he zeskadurez hag he zantelez, a reaz d'ezan labourat evit silvidigez an nesa: karget e oue da brezeg ha da goves. Kement a vad a reaz, ma oue buan anavezet er vro oll, ha ma oue hano anezan betek er broiou tro var dro. Kaset e oue eta d'ar Suiss, da sklerijenna heretiked ar vro-ze.

Ar zant a c'hounezaz eno meur a hini d'ar guir reli- jion, met eun toullad heretiked aheurtet a gemeraz ka- souni ar maro outan. Eun devez, d'ar 24 a viz ebrél 1622, epad m'edo o prezeg, eur protestant a laoskaz varnae eun tenn fuzuil, met ne oue ket tizet. Er pardaez-se, e kavaz var he hent eun nebeud heretiked hag a zaillaz

varnan: « Nac'h ar relijion gatholik, emezo, pe e vezi » lazet. » — « Biken, emezan, na nac'hin ar guir reli- » jion. » Kerkent e oue lazet, a daoliou kleze hag a daoliou kountel, d'he bemp bloaz ha daou-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, nec'het gant an drouk-spered, a ziskuillaz stad he goustians d'he vestr, ha kerkent e kavaz ar peoc'h. Ene kristen, p'o pezo re a nec'hamant var ho spered divar benn eur stad a vuez, divar benn ho silvidigez, digorit ho koustians d'ho tad kovesour, diskleriit d'ezan kement tra a ra nec'h d'eoc'h, hag heullit an aliou a resevoc'h digantan. Hen a resevo sklerijen digant Doue evit ho ren var an hent mad.



AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Mark, Avieler



Sant Mark, euz a lignedez ha tribu Levi, a oa ker mad da brezeg ar feiz, ma oue choazet gant sant Per, evit heuil anezan en he veachou. Mont a reaz gant an Abos-

tol braz-man da Roum, el leac'h m'her sikouraz da skigna ar guir relijion, rag ar gear-ze a oa ar vrasa euz ar bed oll d'ar mare-ze. Eno eo e skrivaz sant Mark Aviel Jesus-Christ, evit rei d'ar gristenien ar blijadur hag ar joa d'he len alies, evit rei d'ezo ive ar galloud da gendele'her da viken en ho zouez ar gelennadurez santel a oa bet diskleriet ha desket d'ezo.

Sant Per her c'hasaz, goudeze, da brezeg an Aviel en Ejipt. Gounit a reaz eno eun niver braz a baianed d'ar guir feiz, dre he brezegennou hag he vuzudou, ha bez' en devoue ar joa da velet ar baianed-se o tont anezo ho-man da vruzuna ho doueou faoz. Euz an Ejipt ez eaz d'an Thebaïd, ha Doue a skuillaz eno bennoziou ker pinvidig var he labourou, ma teuaz ar c'horn douar-ze, karget araok a baianed, da veza goudeze an douar eüruz a zo bet ennan ken alies a ermit santel o veva. E guirionez, e bro ebet, had divin an Aviel n'en deuz douget kaeroc'h frouez.

O veza dent goudeze da Alexandri, e labouraz gant kement a diz evit gounit d'ar guir feiz ar gear-ze, ma teuaz ar peb brasa euz an dud, heb dale, da veza kristenien. N'oa ket aouale'h evito ober kement tra a zo gourc'hemennet dre lezen Doue, heull a reant ouspenn an oll guzuliou santel roet d'eomp en Aviel. Kalz anezo a zileze plijadureziou honest ar bed evit an oberou a drugarez, re all a iea en eul leac'h sioul ha distro, evit pleustri guirioneziou ar feiz.

Goulskoude, darn euz ar baianed, dallet gant ho c'hredennou faoz, en em lakeaz da c'hrosmol eneb an avieler. Guelet a reant dre ma kreske niver ar gristenien, e vianea an doujans evit ho doueou, ha lavaret a reant, ken etrezo, e oa deut an den estren-ze, evit miret ouz an dud da ginnig ezans d'an idolou. C'hoant o doa d'he lakât d'ar maro; dont a rejont a benn d'her c'he-meret, staget e oue eur gorden ouz he c'houzoug ha stlejet e oue evelse dre gear. Ar zant ne ehanaz da veuli Doue epad he basion, ha renta a reaz evelse he ene d'he Grouer, d'ar 25 a viz mae euz ar bloaz 68.

SONJOMP ERVAD :

Hervez an Aviel eo e vezimp oll barnet en heur ar maro. Kalz a dud a garfe gouzout pe seurt fin o devezo: daoust hag hint-hi o devezo an heur da vont d'ar Baradoz? Ho spe-ret a zo enkrezet ha nec'het pa zonzont e kement-se. Mar fell d'eoc'h gouzout ha c'houi a zo var an hent mad, n'oc'h euz nemet sellet ouz ho puez hag ouz kelennadurez an Aviel. Sonjit ervad er c'homzou kaer-man a lavar d'eomp Jesus-Christ er Skritur Zakr: « Petr' a zo skrivet el lezen? Petra » lennit-hu? Grit kement-se, emezan, hag e vevot, da lava-ret eo, hag e viot salvet. Guezit mad eta: ma c'heullit kelennadurez fall ar bed, ec'h en em golloc'h gant ar bed; » ha ma vevit hervez kelennadurez santel an Aviel, e viot eüruz dre c'hras Doue. »

Livirit humbl da Jesus-Christ: « Va Doue, saveteit ac'hanon », grit goudeze ho kalloud evit he zervicha en hoc'h oberou, ha bezit kement a fizianz da veza salvet, evel ma ve deut eun eal euz an env d'hen diskleria d'eoc'h. Na c'houi a blijfe da Zoue ma vevjac'h bepred er stad-se! Nag a nerz a gafac'h er zonz-se, evit kreski bemdez niver hoc'h oberou santel, ha gounit en doare-ze eürusded ar baradoz.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Rikier, Abad

Ar zant-man a zo ganet er Pikardi, en amzer ar roue Klotair II: he dud a oa kristenien vad. Pa oa paotr iaouank, e teuaz eun devez daou visioner breizad da brezeg an Aviel da baianed ar vro; an daou visioner a oa varnez beza goal gaset, pa zeuaz Rikier d'ho digemeret en he di ha d'ho zavetei.

O komz gant ar visionerien-ze, hag o sonjal pegen dall e oa ar baianed, a glaske lakât d'ar maro ar re a zigase d'ezo ar sklerijen, kaloun Rikier a oue entanet,

hag e sonjaz mont, hen ive, da brezeg an Aviel. Ober a reaz, da genta, eur govesion euz he oll bec'hejou, ha da c'houde e studiaz ar Skritur Zakr ha kenteliou ar zent, epad meur a vloaz, araok beza beleget. Eur vech beleg, ec'h en em roaz da brezeg.

Evit tenna bennoz an Aotrou Doue varnan ha var he labourou, e reaz pinijen. He oll vagadurez a oa eun tam bara eiz soubet en dour sklear. Evel ma oa pinvidik, rak he dud o doa roet d'ezan kalz arc'hant ha leveou, en doa eaz da ober aluzennou braz d'ar re baour, d'an intanvezed, d'ar bardounerien a dremene dre he vro; en eur ger, da gement hini en doa ezom.

He garantez evit an dud a reaz d'ezan mont da Vro-Zaoz da brezeg an Aviel, kement a ioul en doa da c'houmit eneo da Jesus-Christ. Distrei a reaz er Frans, ha mont a eure neuze, euz an eil parrez d'eben, er Pikardi ha tro var dro, evit kas a dost hag a bell, sklerijen gaer ar feiz.

Dont a reaz kalz tud da c'houlén digantan ren anezo var hent ar baradoz, hag ar zant a zavaz evito eur gouent hag eun iliz. Eno eo e teue d'ober eur pennad diskuiz, goude ma veze bet o prezeg dre ar vro.

Ker brudet e oa dre ar Frans, ma teuaz ar roue Dagobert d'he velet eun deiz, ha da c'houlén aliou digantan. Rikier a lavaraz d'ezan: « Roue, arabat ec » d'eoec'h e'houeza gant an ourgouil, var zigarez m'oe'h » savet dreist ar re all, ha ma 'z euz eun toullad tud o » veuli ac'hanoe'h: ho furnez a zo dister, hag an heno- » riou a zo rentet d'eoec'h a dremeno. Rentit gloar da » Zoue; dirazan, ho kalloud hag ho furnez ne dint netre. » ho kloar a zo evel eur skeud a dremen, pe c'hoaz, evel » eur bouill moged a vez skubet gant an avel. » Ar roue ne oa ket boaz da glevet ar guirioneziou-ze, met o veza m'en doa eur guir humilite, e selaouaz gant respet komzou ar beleg santel.

« Taolit evez, a lavare c'hoaz Rikier, ouz komzou ar » Skritur Zakr: an dud gallouduz a zivoasko poaniou » brasoc'h eget an dud dister, mar kouezont en ifern, » ha Doue a c'houlénno muioc'h digant ar re o dezo

» resevet muioc'h digantan. Ha m'en deuz poan eur » roue o renta kount euz he vuez he-unan, pegen diez » e vezo d'ezan renta kount euz ar millerou tud a vezo » bet fiziet ennan! Setu perak eo guell plega d'ar re all » eget ne deo ren anezo. An dud izel a respount euz ho » buez ho-unan hebken, ar re huel a ranko respount, » ouspenn, euz ar re a zo dindanno. »

Ar roue a zelaouaz ar c'henteliou-ze gant frouez, hag a drugarekeaz ar zant. Pa oue deut var an oad, Rikier a lavaraz kenavezo d'he venec'h, hag a dec'haz en eun ermitach, er zonz beva eno he-unan gant Doue. An dud a gavaz he ermitach, ha dizale e oue gulet en niver dreist kount a dud klanv ha mac'haniet o tont da c'houlén ar pare digant an ermit, ha tud a renk huel deut da glask aliou ar furnez.

Mervel a reaz d'ar 26 a viz ebrel, euz ar bloaz 645.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, evit sklerijenna roue Frans, a rea d'ezan sonjal en he finvezioù diveza, er varn, en ifern. Peger santel e vefe an dud, m'o defe sonj, eur vech en amzer, euz an Doue oll c'halloudeg a dle ho barn hervez ar justis. « Bezit » sonj euz ho finvezioù diveza, a lavar d'eomp ar Spered- » Santel er Skritur Zakr, ha ne bec'hoec'h biken. »

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Santez Zita, Guerc'hez

Skouer ar vitizien pe zervicherezed

(1212-1272)

Santez Zita a oa merc'h d'eun den paour divar ar meaz, tost da gear Luq, en Itali; ez-vianik e oue dous ha modest meurbed, rak aoualc'h e oa lavaret d'ezi e tisplije eun den da Zoue, evit m'e divije heuz outan

epad he buez. D'an oad a zaouzek vloaz, e oue lakeat da zervicha e ti eur bourc'hiz euz kear Luq. Hirio c'hoaz an ti-ze a zo en he zav, respetet gant an oll, ha var ar mogeriou e veler livet an oberou kaer, hag ar burzudou a reaz ar zantez epad he buez.

Ar zervicherez santel-man a ententaz ervad eun dra: ar guir devosion, evit peb den, a zo ober, guella ma c'hell, oll deveriou ar stad m'ema ennan. Zita a reaz kement-se. Mintin mad e veze var zav evit pedi, ober meditation. Bemdez e kleve an oferen araok ma veze deut ar mare d'ezi da gregi en he labour; bez' e veze atao var evez, aketuz, humbl, sentuz ha sioul bepred. Piou n'en dije ket lavaret, e thie beza karet ha meulet gant kement hini he anaie? Doue goulskoude, evit rei muioc'h a sked da vertuz he zervicherez, a laoskaz ar zervicherien all da heskina anezi: re zevot e oa evito. He mistri zoken a oue da genta en he enep; he mestrez he goall-gase, guech evel eur plac'h diskiant, guech evel eur plac'h ourgouilluz. Kemeret a reaz kement a gas outi, ma ne gave mad netra euz ar pez a rea Zita.

En oll drubuilou-ze, ar plac'h santel na zigoraz ket he ginou evit en em glem; ober a rea peb tra, evel araok, gant ar memez laouenedigez.

Heb dale evelato, he mestrez koulz hag oll dud an ti a oue red d'ezo anzae e oa Zita eur plac'h vertuzuz ha santel. Oll hiviziken e tiskouezjont d'ezi ar brasa karantez ha respet, met ho meuleudiou na rejont nemet poan d'ezi: guelloc'h e kave beza disprijet.

He mestr hag he mestrez o devoue hiziken kement a fizianz enni, ma rojont d'ezi ar gouarn euz a bep tra. Muioc'h a evez a daole c'hoaz euz he labour, diouall a rea an traou kalz guelloc'h eget ma vefent bet d'ezi heunan. Kement tra a veze etre he daouarn a oa eviti eun dra hag e dije kount da renta anezan da Zoue, deiz ar varn. Epad tostik da hanter kant vloaz ma choumaz en ti-ze, biskoaz na oue guelet dilabour. Boas e oa da lavaret: « Labourat a zo pedi. »

Ker kizidik e oa var ar burete ma ne zellaz biskoaz ouz bizach eur goaz; biskoaz ken nebeud na daolaz he

dillad var an deiz, gant aoun na vije ket guisket en eun loare deread ha modest aoualc'h. Eur mevel o veza bet divergont aoualc'h evit lavaret d'ezi eur gomz lubrik, e kemeraz kement a heuz, ma vije eat euz an ti, panefe ma oue kaset, var an heur, ar mevel-ze kuit. Gant an dra-ze, Zita a oa ker kalet oc'h ar boan, ma na glaske morse he eazamant, el labourou tenna.

Ne zouge nemet eur guiskamant dister, dre ma roe peb tra d'ar beorien; alies zoken e tiouere he boued evit he rei d'ezo: biskoaz evelato na roaz netra heb aotre he mistri. He mestr, o velet e kreske he vadou etre he daouarn, he lezaz da rei an aluzen gant largentez, ha Doue, dre veur a vuzud, a ziskouezaz pegement e plije d'ezan karantez Zita evit ar beorien. En eun amzer a gernez, goude m'e devoa roet an darn-vuia euz an ed a oa e grignol he mestr, e oue kavet ar c'hriagnol leunoc'h eget n'oa araok. Eur vech all eun den, paour ha klanv, o veza deut da c'houlén diganti eur banne guin en amzer m'edo Zita o tenna dour, ar plac'h santel a roaz d'ezan euz an dour-ze, rak n'e doa neuze berad guin ebed da rei. Hogen an dour a oue chenchet e guin, hag ar paourkeaz a dorraz he zec'hed, hag a rekouraz eun nerz braz. Ar puns-se a zo hanvet hirio c'hoaz, puns-santez Zita.

Koueza a reaz klanv, ha da genta, den na grede e oa varnez mervel; met ar zantez a anaie guelloc'h he stad, hag a c'houlennaz kaout he zakramanchou. Ho reseo a reaz gant kement a feiz, m'oa tenereat kalonou an oll: tremen a eure en eur ober eun akt a garantez, d'ar bemped devez euz he c'hlenved, er bloaz 1272; 60 vloaz e oa.

SONJOMP ERVAD :

N'ez euz stad ker paour, na ken dister er bed-man, na c'heller enni gant sikour gras Doue, beza eur zant, pe eur zantez. Na peger kaer n'eo ket ar virionez-se da anaout!

Met ive pebez keuz, siouaz! pebez mez evit tud vras ha pinvidik var an douar, pa velint, euz goeled an ifern marteze, ar gurunen gaer o dezo en env, ar re zistera euz ho zervicherien.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Paol ar Groaz

(1694-1775)

Ar zant-man, ganet d'an 3 a viz genver 1694, er Piemont, a oue fur a vianik. Mont a reaz var ar studi, met muioc'h a boan a gemere da zantelât he ene eget da anaout skianchou ar bed. Ar baotred iaouank all a oa er skol gantan, a oa souezet o velet pegen devot e oa, pegement a boan a gemere evit kastiza he gorf.

En amzer-ze, an Turked o doa e'hoant da zailla var ar broiou kristen euz an Europ, hag a rea ho mistri en Hongri; ar gristenien a zavaz evit en em zifen, ha Paol a roaz he hano evit mont gant ar re all d'en em ganna evit he vro. Epad ma oa var hent an Hongri, Doue a genteliaz anezan dre he gousk, hag ar zant a deuaz var he giz d'ar gear. Tentet e oue neuze gant eun eontr d'ezan: kinnig a rea da Baol he oll vadou, gant ma timesfe d'eur plac'h iaouank fur ha pinvidik, gant da rei renk hag honor d'ar famill. Paol a lavaraz nan.

Prest goude, an den iaouank, o veza m'en doa e'hoant da voda en dro d'ezan lod euz ar baotred o doa great ho studi gantan, a anavezaz bolontez Doue en he genver. Guelet a reaz, eun devez ma teue euz an iliz, eur portant du hag a oa varnan eur galoun gant eur groaz ven hag hano Jesus skrivet e guen ive: « Va zud ha me, a » zonzaz Paol, a dle kemeret ar guiskamant-se. »

Neuze evit tenna bennoz an Aotrou Doue var an Urz en doa da zevel, ar zant en em roaz d'ar binijen euz he oll galoun. Beva a rea divar an aluzen, kouskat a rea nebeut, ha e'hoaz var ar e'halet, e kreiz an noz e save evit pedi: bale a rea atao diare'hen ha diskabel. Neuze e skrivaz reolen he Urz, diskouezet e oue da dri pe

bevar zen gouizieg ha santel, hag a ziskleriaz e oa great mad dreist. Ar zant, laouen braz, a ieaz da gaout ar Pab gant he reolen, met ar Pab ne roaz ket he aotre.

Paol ne gollaz ket kaloun, e leac'h grosmolat ha klem, e lavaraz e oa plijet an dra-ze gant Doue evit he vrasa mad, hag e poaniaz epad meur a vloaz da greski he binijennou hag he bedennou, rak en doare-ze eo e temer bennoz an Aotrou Doue var an oberou.

Er bloaz 1725, setu hen adarre e Roum, dirak ar Pab; en dro-man e oue digemeret kalz guelloc'h. Reseo a reaz an Ursiou Sakr, rak ne oa ket bet beleget e'hoaz; da e'houde ez eaz d'eun ermitach var dro Sienn, da veva hervez ar reolen en doa savet. Dont a reaz tud da e'houlen beva gantan, ha Paol ho resevaz gant levenez; dizale an ermitach a oue eur gouent vraz. Etreant ar zant ne baoueze da e'houlen aotre ar Pab evit he reolen; an aotre-ze en devoue er bloavezh 1741: neuze he ene a oue evel beuzet el levenez.

Eur vech ma oue aotret ar reolen, ar venec'h a hanvaz ar zant da Zuperior, ha kaer en devoue Paol pedi he Vreudeur da henvel eun all en he leac'h, e oue red d'ezan choum da ren hed he vuez.

Eun devez, skuiz gant he binijennou, Paol a goezaz goall glanv.

Ar vedisined a oue galvet var he dro; met oll e leverjont: « N'euz pare ebet evitan ». Ar venec'h a gasaz kelou euz ar e'hlenved d'ar Pab Klemant XIV, met hen a lavaraz kerkent: « An Tad Paol a zikour kalz ac'ha- » noun da e'houarn an Pliz, ne laoskin ket anezan da » vont ker buan divar an douar-man ». Hag ar Pab a e'houe hemennaz d'ar venec'h lavaret ar e'homzouman euz he berz d'ar zant: « En hano ar zentidigez a zo » dleet d'in, ne varvoc'h ket brema, divezatoc'h hebenken. »

Pa glevaz an urz-se, Paol a lavaraz: « Vikel Jesus- » Christ eo, senti a rankan, ha pare a ive ». Parea a reaz hag e choumaz beo da e'houde, epad meur a vloavezh.

Mervel a eure goude eur e'hlenved hir ha poaniuz, er bloaz 1775, d'he vloaz ho pevar-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, brudet braz dre he spered a binijen, na gave ket d'ezan morse en defe great aoualc'h evit Doue, klask a rea mont var araok atao en hent ar zantelez. Var hent ar zantelez ne c'hell ket eun den choum a za, an dra-ze a vefe mont var ar c'hiz; difen a zo da lavaret: « Aoualc'h em euz » great, ehanomp ». Sellomp en hon raok hebken, ha leveromp: « Choum a ra d'in c'hoaz hent da ober. »

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EBREL

Sant Per a Veron, Merzer

(1206-1252)

Netra na c'hell diskouez d'eomp sklearoc'h, talvoudegez eun deskadurez kristen, roet abred d'ar vugale, eget buez ar zant-man.

Per a zo ganet e kear Veron, er bloaz 1206: he dad a oa heretik touet. Choaz a reaz eun den gouzieg d'ober skol da Ber, pa oa c'hoaz yaouank, hag ar mestrman a oa eur c'hristen euz ar re vella. Eun deiz, eun eontr d'ar c'hrouadur, o veza digouezet gantan p'edo o tont euz ar skol en amzer n'en doa c'hoaz nemet seiz vloaz, a c'houlennaz digantan petra en doa desket: « Desket em euz guirioneziou ar feiz, hag ho c'hredi » a rin betek va maro. » He eontr a c'hoapeaz anezan, a glaskaz zoken he zislavaret: met netra ne c'hellaz ober d'ezan lentât.

Prest goude e oue kaset da gear Bologn, evit peur-ober he studi. An dizurz hag ar skoueriou fall a rene neuze, er gear vraz-se, etouez ar iaouankizou, met Per a joumaz atao direbech ha didamall.

Pa oue achu he studi gantan, Per a ieaz da vanac'h-rak aoun en doa d'en em goll er bed.

Ar zant a oa mad da brezeg, met tamallet e oue eun dervez e gaou, ha neuze he zuperior a zifennaz outhan sevel er gador, hag a gasas anezan d'eur gouent var ar meaz. Er gouent-se e tremene kalz amzer o pedi daoulinet dirak he Grusifi. Eun deiz, en eur zellet ouz imach Hor Zalver stag ouz ar groaz, e tigouezaz d'ezan lavaret: « O va Jesus, daoust ha va lezel a reot-hu pelloc'h » er boan, me direbech goulskoude; gouzout a rit n'em » euz great drouk ebed. »

Hag e klevaz neuze freaz ar c'homzou-man o tont euz ginou ar C'hrist: « Ha me, pe seurt am oa great, » evit beza bet lakeat d'ar maro var ar groaz ». Ar c'homzou-ze a lakeaz karantez ar zant evit Jesus da greski c'hoaz, ha divar neuze, e c'houzanvaz he boaniou heb mui klemm. Doue, a benn eur pennad, a sklerijen-naz Superiorez ar zant, anaout a rejont e oa bet tamallet e faoz: setu m'en devoue konje da brezeg adarre.

Ar zant en em lakeaz neuze da rei missionou en Toskaan, er Romagn, hag e Milan: ken helavar e oa, ma teue ar bec'herien a vagadou da jench buez.

Eun heretik aheurtet en he zallentez, ha ne glaske nemet an doare da goll brud-vad Per e touez an dud, a reaz eun deiz, an neuz da veza klanv, hag a bedaz ar zant da zont da rei d'ezan ar iec'hed. C'hoant en doa da ober, goudeze, goap euz an den santel. Ar zant a ieaz betek enghan. « Selaouit, emezan neuze, pedi a ran Je- » sus-Christ, va Doue, da rei d'eoec'h ar iec'hed, mar » d'eoec'h klanv e guirionez, met ive d'ho renta klanv, » ma livirit gevier d'in. » Var an taol e teuz eur fallaen ker braz var an heretik, ma kavaz d'ezan edo o vont da vervel. Kovez a reaz he bec'hed, pedi a reaz Per da gaout truez outan, hag azalek neuze e vevaz e kristen mad, abalamour m'hen doa rekouret ar iec'hed, dre virit pedennou ar zant.

An heretiked, abalamour ma prezege Per eneb dezo, a vage kasouni ar maro outan. « Gouzout a ran, emez- » han eun devez, e vezin lazet ganto: etre kear Rom ha » Milan eo e skuillint va goad; evidon-me, na vezin » morse laouenoc'h eget en devez-se. »

Hag evit guir, nebeut amzer goude, epad ma 'z ea ar zant varzu unan euz ar c'heariou-ze, daou vuntre her gede var an hent. Faouta a rejont d'ezan he benn gant eun taol bouc'hal, met ar merzer, pilet d'an douar, a zoubaz he vizied er goad a rede euz he c'houl, hag a skrivaz var an douar: **Me a gred e Doue**. Eun eil taol a reaz da ene ar zant nijal var eun d'ar baradoz, er bloaz 1252: Per a oa 46 vloaz.

SONJOMP ERVAD :

En amzer ma taolet dismegans var ar zant-man, e tigue-zaz d'ezan lavaret: « O va Jesus, gouzout a rit oun direbech, » perak e rankan-me gouzanv eur seurt dismegans? » Neuze e klevas Hor Zalver o respount d'ezan: « Ha me, petra » em euz-me great evit beza lakeat d'ar maro var ar groaz? » Na kaera respount! Pa vezimp er boan, en anken; pa vezo rannet hor c'haloun gant fallagriez hiniennou euz hor c'herent pe euz hon amezeien, pa vezimp tentet da glem, sel-lomp ouz Hor Zalver stag ouz ar groaz, sonjomp er c'hom-zou-ze, hag e plegimp eaz da volontez an Aotrou Doue.

AR TREGONTVED DEVEZ A VIZ EBREL

Santez Katell a Zienn

Euz a Drede Urz Sant Dominik

(1347-1380)

Tad ha mam ar zantez-man, dimezet e kear Sienn, en Itali, a zo bet benniget gant Doue; bez' o deuz bet, d'ezo ho daou hebken, pemp krouadur var 'n ugent. Ganet er bloaz 1347, Katell a oa douget ez-vianik da bedi, bez' e doa dreist-oll eun devosion dener evit ar Vere'hez Vari. Kounta a reer, ken aliez guech ma pigne en deleziou euz he zi, e souble he glin, bep delez, evit lavaret eun Ave Maria.

He c'herent o veza kavet d'ezi eur pried dioc'h he doare, a aliaz anezi da zimezi; met daoust m'e doa kalz doujans evito, e fiskleriaz e doa great he zonz da jom atao guere'hez. Mam Katell a falveze d'ezi goulskoude dimezi he merc'h en despet da bep tra, hag o velet ne rea van euz he aliou, a zammaz anezi a labouriou, met ar vere'h santel, e kreiz tregas poaniuz an tiegez, na gollaz biskoaz ar guel a Zoue. He labourou ne c'hellent ket miret na veze bepred unanet gantan, dre an orezoun hag ar beden. He mam, souezet o velet anezi dous hag humbl, a ehanaz da dregasi Katell. Lezet e oue hiviziken da veva hervez bolontez Doue.

Ar vere'h iaouank a renaz divar neuze eur vuez a binijen: iun a rea bemdez. Evit guele n'e devoa nemet eur planken, ha dougen a rea bepred eur gouriz houarn. Ober a rea pinijennou ker rust, ker kalet, ma z'eo diez gouzout penaoz eur plac'h a drivac'h vloaz, a hent all ken dister he iec'hed, e deuz gettel ho gouzanv. Kemeret a reaz guiskamant leanez Trede Urz sant Dominik. Bez' e oa skouer he oll C'hoarezed dre he feiz birvidik, he c'harantez evit ar beorien, he aket da bour-vei d'ho oll ezomou, ha d'ho bizita en ho c'hlenvejou.

Doue, evit kreski c'hoaz he zantelez, a laoskaz eun devez an drouk-spered da lakât e penn al leanez devot sonjezonou eneb ar burete. Ar zantez a ruzie gant ar vez, hag a gase kuit, guella ma c'helle, an traou divodest-se, met dont a reant en dro. Neuze e rede d'an iliz, evit klask eno peoc'h ha sonjezonou pur, met ar zonzonou fall a heulie anezi. Ha kaer e doa pedi, labourat, ober pinijennou rust, ar zonzonou divalo-ze ne 'z eant ket diouti: epad meur a zevez, he ene a oue evel beuzet en eur mor a lousdouni.

An treac'h a joumaz gant al leanez, ha Doue he digollaz o rei d'ezi eun tanva euz eürusdet ha purete ar baradoz. Guelet a reaz Jesus he muia karet, hag e c'houlennaz digantan: « E pe leac'h edoc'h, va Zalver ben- » niget, epad ma oa kement-se a draou divalo var va » spered? — « En ho kaloun edon, va merc'h, eme » Jesus, hag eüruz e oan o velet peger pur e chou-

» mac'h, epad ma klaske an drouk-spered sklabeza
» ac'hanoc'h. »

He buez penn-da-benn a zo bet eur burzud paduz, met burzudusoc'h e seblantaz beza c'hoaz he amzer ziveza. Azalek ar c'houraiz betek gouel ar Iaou-Bask ne gemere ken boued, ken magadurez, nemet ar gommunion zantel. Bara an elez, a reseve bemdez, a oa aoualc'h evit he maga ha rei d'ezi eun nerz dreist natur, evit gouzanv he finijenou rust ha kalet. He ger a oa: Karet Doue, ha gouzanv dre garantez evitan.

Mervel a reaz d'he zri bloaz ha tregont, karet hag henoret gant ar Pab Gregor XI hag ar brinsed.

Katell e deuz bet eun devosion ken dispar e kenver Itroun Varia ar Rozera, hed he buez, ma vez lakeat he fatrom dirak hini sant Dominik, var daolen Breuriez ar Rozera, en ilizou ha chapeliou. He c'horf a zo bet diouallet gant Doue euz peb breinadurez.

KENTELIOU SANTEZ KATELL A ZIENN

I. — Eun dra red eo karet Doue a greiz kaloun, heb klask dre-ze hor mad hon-unan. Evit kaout ar garantez parfet-se, n'or beuz nemet sonjal ha guelec'het pegement omp karet gant eun Doue maro var ar groaz dre garantez evidomp.

II. — N'ez euz nemet ar pec'hed hag a c'hell beza hanvet e guirionez eun drouk.

SONJOMP ERVAD :

Tud ar zantez-man o deuz bet pemp kouadur var 'n ugent. Nag eüruz, na direbec'h eo, da bred ar maro, an tad hag ar vam a c'hell lavaret, en eur ginnig ho bugale: « Setu » hi oll aze, o va Doue; n'euz en ho zouez, nag hini a re, » nag hini re nebeut. »



AR C'HENTA DEVEZ A VIZ MAE

Sant Jakes ha sant Philipp, Ebestel



An daou zant-man a zo bet dibabet gant Jesus-Christ evit beza he ziskibien, ha sikouret o deuz skigna ar relijion dre ar bed, en eur brezeg an Aviel hag en eur vervel evit ho feiz.

Sant Jakes, mab Alphee ha breur an Abostol sant Jud, a zo bet hanvet an den Just, abalamour d'ar zantelez vraz a ziskouezaz epad he vuez. Kastiza a rea dalc'hmad he gorf dre binijennou braz, evit dere'hel he galoun neat diouz ar pec'hed: ne fellaz d'ezan bis-koaz guiska nemet dillad gros, hag evit en em vaga ne gemere morse nemet boued dister. Tremene a rea kalz amzer o pedi, daoulinet hag he zaouarn e kroaz; var a

lavar sant Jerom, e teuaz evel-se pennou he zaoulin da veza ker kalet ha re eur c'hanval.

Goude m'oa pignet Hor Zalver en env, da zeiz ar Iaou-Bask, an ebestel a lakeaz sant Jakes da eskop e kear Jerusalem. Eno e renaz eur vuez ker santel, ma veze eürus an dud pa c'hellent touch ouz he zae hebken. Epad an tregont vloaz ma c'houarnaz an eskopti-ze, e c'hounezaz kalz eneoù da Zoue dre he skridou, ha dreist holl dre he zouzder hag he garantez evit an dud.

Evel an niver brasa euz an ebestel, sant Jakes a varvaz dre ar verzerenti. An dud dizoue o doa c'hoant lakât anezan da nac'h he feiz, ha da vont eneb ar guirioneziou en doa desket d'ar gristenien; he gas a rejont eta var lein an templ, evit ma c'helje en em zislavaret ac'hano, a vel d'an oll.

E leac'h senti ouz an dud difeiz-se, ar zant en em lakeaz da lavaret a vouez huel, e krede e Jesus-Christ guir den ha guir Doue, savet euz a varo da veo. An enebourien a ieaz en egar ouz he glevet, hag a stlapaz anezan d'an traon divar lein an templ: ne oue ket laz et var an taol, kaout a reaz c'hoaz nerz aoualc'h evit en em lakât d'an daoulin, da bedi evit he vourrevien. Lavaret a reaz evel Jesus: « Va Doue, pardounit d'ezo, » rak ne ouzont ket petra reont. » An dud kriz-se a ieaz muioc'h a zrouk enno ouz he glevet, hag a daolaz mein outan betek m'her gueljont maro. Kurunet e oue gant Doue, epad ma pede evit he vourrerien, da genver ar zul Fask, er bloavez 62.

Sant Philipp a oa euz ar Galilee, ha goude m'en doa klevet Jesus o lavaret d'ezan mont d'he heul, ne glas-kaz mui nemet eun dra: savetei an eneoù en eur lakât an dud da anaout ha da garet an Aotrou Doue.

Araok he basion, Jesus a lavaraz d'he ebestel e roje d'ezo divezatoc'h muioc'h a anaoudegez euz Doue he Dad, ha sant Philipp, gounezet he galoun o klevet kement-se a lavaraz: « Mestr, roit d'eomp 'ta ar c'hras » da velet Doue ho Tad, na c'houlennomp nemet an dra-ze diganeoc'h. » Hor Zalver, evit rei d'ezan da entent e oa Doue, a respountaz: « An hini a vel ac'hano-me a

» vel ive va Zad, rak va Zad ha me ne reomp nemet » unan », da lavaret eo, nemet eun Doue.

Goude m'oa doa resevet ar Spered-Santel, da zeiz ar Pantekost, an ebestel a ieaz dre ar bed, peb hini euz he du, da brezeg an Aviel. Sant Philipp a skoaz etrezek ar Phriji hag ar Sithii, hag a c'hounezaz da Zoue kalz tud er broiou-ze.

Hiniennou a oa goulskoude o labourat enep d'ezan, ha na felle ket d'ezo he glevet o prezeg ar relijion gristen; eun deiz, dre zrouk outan, e stagchont anezan ouz ar groaz, hag eno e oue peurlazet a daoliou mein. Ar baianed euz kear Hieropolis eo a reaz d'ezan kement-se, abalamour m'en doa laz et eun aer, henoret ganto evel Doue.

SONJOMP ERVAD :

Sant Philip a lavare guechall da Zalver ar bed: « Grit » d'eomp anaout ho Tad euz an env, na c'houlennomp ken » diganeoc'h. » Ha c'houi, ene kristen, ha c'hoant o peuz, c'houi ive, da anaout Doue ho tad? Neuze, klaskit anezan er beden, eno eo ec'h en em ro d'anaout.

Nebeut a dud a zo hag a c'hell lavaret e guirionez: « Doue » a zo aoualc'h evidon. » Peurliesia e c'houlenner digant Doue ar iec'hed, an nerz, an danvez, met piou a lavar evel sant Aogustin: « Roit d'in, va Doue, ar c'hras d'hoc'h anaout ha » da anaout va zempladrez, ne c'houlennan ken diganeoc'h. » Kalz tud a glask ho flijadur er meaz euz a Zoue, ha n'her c'havont ket: sonjal a dlefent n'ez euz guir eürusted ebet, nemet an hini a zo hervez Doue.

AN EIL DEVEZ A VIZ MAE

Sant Athanas, Eskop

(296-373)

Athanas a oa ginidik euz a gear Alexandri en Ejipt. He dad hag he vam, kristenien vad, a felle d'ezo sevel ho mab e doujanz Doue. Klask a rejont eta, evit he

skolia, eun den a feiz krenv, desket var skianchou ar bed, ha dreist oll var ar skianchou zakr. Gant ar mestr-ze Athanas a deuz da veza gouzieg var bep tra, hag hervez an Tadou Santel euz an Iliz, eo bet unan euz ar re o deuz labourer ar muia, dre he vouisiegez hag he sridou, da zifen ar feiz e bro ar Zao-heol. Al liziri en deuz skrivet enep ar falz doktored, a ziskouez aouale'h peger braz e oa he ziskadurez, ha peger birvidik e oa he garantez evit Doue hag an Iliz

En he amzer e oa eur maread heretiked er vro-ze, hanvet an Arianed, hag a lavare bep seurt traou faoz divar benn Jesus-Christ; mont a reant zoken betek lavaret n'eo ket Doue. Eun nebeudik eskibien, gant eur bodad beleien, a oa e penn an Arianed. Ar Pab a gemennaz d'an oll eskibien en em voda e Nisee; eno, gant sikour ar veleien gouzieka, e thient diskleria ar guirionezou a zo da veza kredet divar benn Mab Doue en em c'hreat den. Daou gammad a dlie, en hano ar Pab, ren ar c'honsil. Athanas en doa neuze ar vrud da veza ar gouzieka den euz he amzer, ha setu perak eskop Alexandri a reaz d'ezan mont gantan d'ar c'honsil, evit serra ho ginou d'an heretiked a deuje di, da gomz eneb Jesus-Christ. E guirionez, ober a reaz mez d'ezo oll: dislavaret a reaz ho falz-kredennou an eil goude eben, ha red e oue d'ezo pleza dirazan, hag anzav edo ar virionez gantan. Goulskoude e leac'h ho gomit d'ar feiz, ne reaz nemet lakât muioe'h a zrouk enno; hag ober a rejont brezel d'ezan betek fin he vuez, abalamour m'en doa miret outo d'ober ho labour fall.

Pa varvaz eskop Alexandri, Athanas a oue dibabet evit gouarn he eskopti var he lere'h. Biskoaz den ne lakeaz muioe'h he bean evit ober mad al labourou euz he garg: eun tad e oa evit he bobl: evel ma tifen ar Pastor mad he zerved ouz ar bleiz, hen a oa prest ive bepred da stourm, e riskl he vuez zoken, evit difen ar feiz katholik e kaloun an dud a oa fiziet emman.

An heretiked o doa dale'het kasouni outan abaoue konsil Nisee, hag o doa divizet, ken etrezo, dont a benn anezan en eun doare benag. Hen tamall a rejont da

veza great bep seurt traou grevuz ha poaniuz, ha dont a rejont evel-se abenn da lakât kas anezan er meaz euz he vro, beteg teir guech. Met bep tro e teue d'ar gear d'rebech ha didamal, hag he bobl a rea d'ezan eun digemer euz ar re gaera.

He enebourien a icia muioe'h a zrouk enno c'hoaz, o velet ober kement a honor d'ezan, hag en em glevaz evit rei d'ezan taol ar maro. Athanas a rankaz mont da guzat outo, hag epad eur penad mad a amzer e chomaz en eur puns seac'h. Eno, eur mignoun a zeue bemdez da zigas d'ezan peadra da astenn he vuez. Goudeze e chomaz c'hoaz kuzet epad pevar miz all dindan eur volz, el leac'h m'oa beziet he dad. Met ne golle ket he amzer evit an dra-ze: dale'h mad e skrive evit difen ar feiz eneb an hereziou; liziri a skrive ive d'he veleien ha d'he dud fidel, evit ho c'hemmerza ha lavaret d'ezo dere'hel start da feiz Jesus-Christ.

Erfin, goude beza gouarnet he eskopti epad c'houee'h vloaz ha daou-ugent, ha gouzanvet bep seurt poaniou euz a berz he enebourien, e varvaz e peoc'h en he eskopti, er bloaz 373, pa rene he zeitek vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :


Doue a laosk ar re fall, avechou, da voall gas he zerviche-rien vella, evit miret outo d'en em goll e kreiz an henoriou hag ar meuleudiou. E peb tra Doue a glask mad an ene, ha pa zigas deomp eun dra ziez benag, e leac'h en em glem, e flefemp he drugarekât.

Ma teuer da rebech d'eoc'h eun dra benag ha n'oc'h euz ket great, arabat e zafe drouk ennoc'h met lavarit o peuz meritet ar pez a damaller d'eoc'h, trugarekait Doue da veza roet tro d'eoc'h da c'houzanv evit ar virionez; n'en em lakit ket e poan d'en em zifen, Doue a raio kement-se guelloc'h evidoc'h, abred pe zivezad. « Eüruz e vezoc'h, eme Jesus, » pa vezoc'h goall gaset gant an dud abalamour d'in-me. »



AN TREDE DEVEZ A VIZ MAE

Gouel ar Groaz Kavet



Hirio e vez henoret Kroaz Hor Zalver benniget, abalamour ma oue kavet da genver an devez-man, gant santez Helena, mam an impalaer Konstantin.

An impalaer-man, en amzer ma oa o vont gant he arme enep Maxans, a velaz eun devez en ear eur groaz skedusoc'h eget eun heol; e kichen e oa skrivet ar c'homzou-man: « in hoc signo vinces »: da lavaret eo: treac'h e vezi dre ar merk-man. Dere'hent he emgann vraz gant Maxans, (hag an hini a vefe treac'h a dlie beza mestr ar bed), Konstantin a glevaz dre he gousk, Doue o c'hourc'hemen d'ezan lakât eur groaz var armou pep hini euz he zoudardet. Senti a reaz kerkent, ha gant eun arme kalz bianoc'h, e c'hounezaz var ar paian Maxans eur viktoreuz ar re gaera: he enebour a oue beuzet pa glaske tec'het. Divar neuze, an impalaer a ziskouezaz kaout respet evit ar Groaz, pa 'z eo guir e doa roet an treac'h d'ezan.

He vam, santez Helena, devotoc'h c'hoaz da Zoue eget he mab, a zonzaz ne oa ket aoualc'h renta honor da groaziou koeor hag houarn, met e tliet honori dreist oll ar guir groaz m'oa marvet hor Zalver Jesus-Christ varni, ha setu perak, poulzet gant ar Spered-Santel, ez eaz he-unan da Jerusalem, evit klask ar c'hoat presiuz-se, er bloaz 326.

An impalaerez santel e devoue poan. Den n'en doa sonj mad aoualc'h, e pe leac'h oa bet lakeat ar Groaz Sakr goude ma oa bet distaget diouti ar c'horf benniget; ha kement a atrejou a oa var menez Kalvar, ma oa diez kaout plas ar Groaz. Ar baianed, evit sklabeza al leac'h santela euz an douar, o doa savet var menez Kalvar eun templ en honor da Venus, doueez ar pec'hed vil.

Ar zantez a reaz pilat an templ, ha toulla etouez an atrejou; etretant e pede, hag e c'houlenne ho ali digant ar re gosa euz ar Jusevien savet er feiz kristen, setu ma oue selaouet gant an Aotrou Doue. Kavet e oue teir Groaz, ha ganto an tachou a oa bet sanket e treid hag e daouarn Hor Zalver; kavet e oue zoken an tamik planken a oa bet staget a-zioe'h penn Jesus hag a verke: Jesus a Nazareth, roue ar Jusevien. Ar plankennik-se a ziskoueze, heb douetans ebet, e oa unan euz an teir groaz, guir Groaz Jesus.

Met pehini euz an teir a oa e guirionez hini Salver ar bed? An impalaerez a oa nec'het. Goulen a reaz ali sant Makair, eskop Jerusalem, hag heman a reaz d'an dud pedi: digas a reaz eur vaouez toc'hor var menez Kalvar, da douch ouz an teir groaz; an diou genta na rejont vad ebet d'ez, met pa douchaz ouz an drede, e oue pareet.

En devez-ze zoken, ar zant a gavaz var he hent eun den maro hag a gaset d'ar bez: touchet e oue ar groaz outan, ha kerkent e savaz euz he arched, leun a vuez.

Santez Helena, laouen dreist o velet ar burzudou kaer-ze, a rentaz gloar hag honor d'ar Groaz Santel; sevel a reaz, var gern menez Kalvar, eun iliz ledan ha pinvidik, eno e c'horrnoz ar peb brasa euz ar Groaz presiuz; eul loden all a oue kaset da Gonstantinopl, rak d'ar mare-ze, an impalaer a oa o choum eno; an drede loden a oue kaset da Roum, ha lakeat en eun iliz great eviti, hag hanvet evit-se: « Iliz Guir Groaz Jerusalem. »

Konstantin a zifennaz e tro ar mareou-ze, na vefe koundaonet den ebet ken da vervel var ar groaz: divar neuze ar groaz, ken disprijet araok, a deuaz da veza henoret ha doujet.

SONJOMP ERVAD :

Ha sonjet oc'h euz, da vad, er pezh a velit merket var ar grusifi ken aliez: INRI. Lod a lenn *inri* ha ne ententont netra. An *i* a zo laket aze evit *J*, diskleria a ra freaz: Jesus Nazareth, Roue ar Juzevien. Ia, an hini a zo bet staget ouz eur groaz, hag a zo maro varni, a oa roue ar Juzevien, met roue an oll e oa er memes amzer, roue an env hag an douar.

Ha sonjal a rit-hu e kement-se pa velit Jesus gant he zaouarn toullet, he gostez digoret, he benn kurunet, stag ouz ar Groaz?

Ha sonjal a rit-hu, eo evidoc'h, pec'her, en deuz divoasket poaniou garo he Basion?



AR PEVARE DEVEZ A VIZ MAE

Santez Monika, Intañvez

(332-387)

Ar zantez-man a oa ganet en Afrik, en eur famil zantel ha leun a zoujans Doue. He mam a zeskaz d'ez abred bep seurt pedennou kaer, ha ne skouize ket ouz ho lavaret goudeze. Guella ma c'helle, e pellea diouz ar pezh a oa goest d'he dougen da offansi Doue, hag he flijadur a oa komz outan dre ar beden.

En he bugaleach e roaz bepred skouer vad d'ar re all; ha pa oue savet da blac'h iaouank, he zad he dimezaz d'eur boure'hiz pinvidik hanvet Patris. Met siouaz! paian e oa c'hoaz, ha ne felle ket d'ezan zoken klevet hano euz ar guir Doue. Ren a rea, ouspenn, eur vuez direol, hag evit an distera tra ez ea drouk ennan. Monika a boaniaz dioc'htu da zouzât he spered, ha d'hen distrei diouz he zizursiou, dre he dousder hag he fasian-ted. N'euz fors peger prim ha pegen froudennuz e oa, ne glaskaz biskoaz enebi outan: keit ha ma vele drouk ennan, na lavare grik ebet; met pa veze tremenet ar barr-arne, ne vanke ket da lavaret ar pezh a c'helle ober vad d'ezan evit hen lakât da jench buez. Bemdez ive e c'houlenne evitan en he fedennou ar c'hras da veza kristen.

Selaouet e oue erfin, ha bez' e devoue ar blijadur da velet he fried o tilezer ar relijion baian, o trei kein d'he zizursiou tremenet, hag o reseo ar vadiziant. Bloaz araok he varo e oa chenchet oll: al lodenn vrasa euz he amzer a dremene o pedi Doue, hag o c'houlenn pardoun digantan.

Monika a gendalc'he ive da bedi ha da labourat var dro he zi; ha pa zeue tud d'he guele, ne gomze ganto

nemet divar benn an traou santel, ne vanke ket ken nebeut da rei d'ezo aliou mad, pa gave tro d'hen ober. Eun devez e teuaz eur c'hreg iaouank d'en em glem outi abalamour ma veze goall skoet gant he fried, ha Monika a lavaraz d'ezi: « Lakit evez na vefac'h penn » abek hoc'h-unan euz a gement-se! na glaskit ket » enebi ouz ho pried, pa vezo drouk ennan; roit peoc'h » neuze evit terri he voall humor, hag evel-se e pel- » laoc'h diouzoc'h meur a dam poan. »

Pa zeuaz da veza intanvez, Monika na veze mui guelelet er meaz euz he zi, nemet pa 'z ea da gas eun aluzen benag d'ar beorien; choum a rea er gear da labourat ha da entent ouz he bugale. Ar c'hosa anezo, hanvet Augustin, a lakea anezi, eun tachad a oa, da skuill daelou c'houero, dre he vuez direol: kollet e oa bet en eur goumpagnunez fall, ha kouezet e oa ken izel ha ma c'heller koueza e bouillen ar pec'hed. Glac'har Monika a oa ken truezuz ma lavare eun eskop santel: « Eur mab » hag a zo skuillet kement a zaelou varnan, na c'hell » ket mont da goll. »

E guirionez, pedennou ar vam devot a oue selaouet: guelet a reaz he mab o chench buez, hag o tistrei ouz Doue a galoun vad. Divezatoc'h memez e teuaz da veza eun eskop santel, hag unan euz brasa doktored an Iliz.

Monika he vam, a lavaraz neuze da Zoue, dre he anaoudegez vad: « Ra viot meulet da viken, o Doue » trugarezuz, na c'houlennan mui netra diganeoc'h er » bed-man: mervel a ran laouen pa 'z eo plijet ganeoc'h » selaou va fedennou. » Konsolet gant he bugale var he guele a boan, e varvaz prestik goudeze, he ene leun a beoc'h, er bloaz 387.

SONJOMP ERVAD :

Santez Monika, dre he daelou hag he fedennou, e deuz lakeat he mab da zistrei divar hent an ifern: hirio, siouaz! ez euz ive kalz bugale hag o dije ezoum da veza tennet divar an hent-se, met rouez eo an tadou hag ar mammou a deu da skuill daelou en eur bedi evit silvidigez ho bugale. Lenva a reont marteze pa velont ho bugale oc'h ober guall zispi-

gnou, pe o lakât an dishenor da goueza var ho famil; met ha gouela reont-hi ive d'ho fec'hejou? C'houi hag a zo glac'har ret pa velit ho pugale direspét en ho kenver, ha glac'haret oc'h-hu ive p'ho guelit oc'h offansi Doue?

Kemerit skouer divar ar zantez-man: he mab a zo deut da veza eur zant, gant sikour he fedennou; pedit ive evit ho pugale, ma vezint eun deiz e touez ar zent er baradoz.

AR PEMPED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Pi V, Pab

(1504-1572)

Ar zant-man a oa ginidik euz eur gear vian euz an Itali (1504). He dud a oa euz eul lignez vraz ha pinvidik, met ho madou a oa bet lamet diganto: an dra-ze ne viraz ket outo da zével mad ho bugale. Ar zant-man a lavar he-unan ne ankounac'heaz biskoaz ar c'henteliou kaer a roaz d'ezan he gerent p'edo er gear.

Kaset e oue d'ober he studi en eur gouent euz Urz Sant Dominik, ha d'an oad a bemzek vloaz e kemeraz guiskamant Tadou an Urz-se, hag ec'h en em roaz oll da zervieha an Aotrou Doue.

Desket mad evel ma oa, e oue lakeat dioc'htu d'ober skol d'ar re all. Lakeat e oue, gant an amzer, e penn ar gouent, hag her gouarn a reaz gant eur furnez dispar. Avechou ive e veze galvet da brezeg er c'heariou braz, ha bep tro e rea kalz vad d'an eneo.

An Tad santel ar Pab, o veza klevet hano euz he zantelez hag euz he vouiziegez, a hanvaz anezan da eskop. Poania a reaz raktal da reizha mad peb tra en he eskopti. Dre he zouzder hag he vuez santel, e c'hounezaz buan kalz eneo da Zoue; ha dre he brezegennou nerzuz, e lakea ar bec'herien da zistrei var an hent mad, ha da ren eur vuez kristen.

Pa zeuaz ar Pab Pi IV da vervel, ar zant-man a oue banvet da c'houarn an Iliz, hag a gemeraz an hano a Bi V. Neuze, gant he oll/vouziegez, ec'h en em lakeaz da labourat evit brasa mad ar feiz kristen. Ober a reaz kas er meaz euz a Roum eur vanden dud fall a oa eno, ha ne reant nemet koll ar re all dre ho goall skoueriou; rei a reaz eul loden euz he vadou d'an dud ezomek, ha kas a reaz missionerien kalounek da brezeg an Aviel er broiou pella euz ar bed.

En he amzer, eur boblad tud digernez, an Turked, a rea brezel meurbed d'ar guir feiz; ho zonzj a oa distruja kement kristen a gafhent dre ar bed. Neuze ar Pab, o velet an drouk a reant, a skrivaz d'ar rouanteleziou katholik, evit pedi anezo da zével soudardet evit enebi ouz an dud difeiz-se. Kas a reaz he aluzen evit sikour anezo, met ho alia a reaz ive stard da bedi: « Dre ar beden, emezan, eo o pezo an treac'h varno. »

An devez araok ar stourmad, ar zoudardet kristen a icaz oll da goves ha da gommunia, hag antronoz e c'hounesjont eur viktor euz a re gaera var an Turked: ar re-man a oue flastret evit atao. Ugent mil anezo a joumaz var an dachen, hag ouspenn pemzek mil pri-zonnier kristen a oue torret ho chadennou.

Epad an emgann, an Tad Santel ar Pab a bede Doue da zellet a druez ouz arme ar gristenien, ha goulén a reaz ive ma teufe an oll Genvreudeur da lavaret ar Rozera evito: ho fedennou a oue selaouet.

Dre anaoudegez vad, ar pab a c'houre'hemennaz lakât ar c'homzou-man e litanion ar Vere'hez: « **Auxi-
» lium christianorum, ora pro nobis:** Mari, sikour ar
» gristenien, pedit evidomp. »

En despet d'an tregas en doa gant an Iliz a bez da ren, ar zant-man a gave gouskoude amzer da asten he bedennou ha da ober, en he gosni memez, pinijennou kalet; ouzpenn-ze, bemdez e lavare he japeled, hag aketuz e oa ive da zont d'ar pedennou diouz an noz, hag hen pab gouskoude, gant tud he di.

Koueza a reaz klanv, d'an oad a eiz vloaz ha tri ugent; met he glenved a oue berr: ne zaleaz ket da rei he ene kaer da Zoue, er bloaz 1572.

SONJOMP ERVAD :

Na peger bras eo nerz ar beden! dreizi e tigoror dor ar baradoz, hag e serrer dor an ifern; dreizi e resever digant Doue hep seurt grasou.

Ar zant-man en doa eur fizianz vraz er beden; c'houi ive, en em erbedit ouz Doue, lakit ho fizianz ennan; nemet a du e ve ganeoc'h, ne reoc'h biken labour talvouduz ebet.

Pa viot gant ho peden, na zizonjit ket pedi evit ar re all, evit ho tud, ho pugale, an Iliz hag ho pro; na falgalounit ket var zigarez ne vezit ket selaouet dioc'htu. Doue a deuio d'ho sikour abred pe zivezad, hag ho pedennou a zervicho d'eoc'h er bed-man hag er bed all.

AR C'HOUECHVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Ian en eur gaoter eol bero

Mam daou euz an ebestel, sant Jakez ha sant Ian, a zeuaz eun devez da c'houlén digant Hor Zalver Jesus-Christ lakât he daou vab da azeza da dosta d'ezan er baradoz. Hor Zalver a c'houlennaz diganto: « Ha guest » oc'h-hu da eva ar c'halir a dlean da eva va-unan? » da lavaret eo: « Ha guest oc'h-hu da c'houzanv poan » eveldon? » An daou abostol a respountaz e oant guest da c'houzanv. Neuze Jesus a lavaraz d'ezo: « Gouzanv » a reoc'h e guirionez. »

Komzou Jesus-Christ a zeuaz da vir evit sant Jakez pa oue skourjezet, ha dreist oll pa oue lakeat d'ar maro, var urz ar roue Herodes, met sant Ian n'eo ket maro merzer. Peur eta en deuz gouzanvet?

Merzer eo bet, da genta, p'en d'euz guelet poaniou Jesus en he Basion hag en he varo var ar Groaz. Pebez rann-galoun evitan, p'edo etal ar groaz gant ar Vere'hez Vari, heb gellout rei an distera didor d'he vestr beniget!

Merzer eo bet c'hoaz, pa 'z eo bet skourjezet, hen hag an ebestel all, da c'houde ma oa diskennet ar Spered-Santel varno da zeiz ar Pantekost.

Merzer eo bet dreist oll, p'eo bet soubet en eur gaoter eol bero, en amzer an impalaer Domisian. Den kriz ha dinatur, goasoc'h eget Neron zoken, Domisian a lakeaz d'ar maro ar muia ma c'hellaz a gristenien. Kasouni en doa outo, rak buez santel ar gristenien a oa eur rebech evit he vuez direol.

An Abostol sant Ian a veve c'hoaz en amzer-ze. Diskuillet e oue da c'houarnner paian Ephes, ha taolet er prizoun. Eun den ker brudet hag an Abostol braz dre he zantelez, he c'halloud, he viraklou, na c'helle ket beza lakeat d'ar maro en eur gear vian euz an Asi; chadennet mad e oue, ha kaset da Roum evit beza barnet gant an impalaer he-unan, er bloaz 95.

Pa velaz dirazan an diveza euz an Ebestel, doktor ar garantez, Domisian ne oue ket tenereat he galoun: barn a reaz ar zant da veza devet en eur gaoter eol bero. Komzou an impalaer a laouenneaz kaloun an abostol: mall en doa da vont gant Jesus d'ar baradoz. Met ar gaoteriad eol ne reaz drouk ebet d'ar zant: o tont er meaz euz ar gaoter, e oa iac'hoc'h hag evel iaouankoc'h eget n'oa o vont enni.

An impalaer, skoet o velet ne oa en em gavet drouk ebet gant an abostol, na reaz ket lakât anezan etre daouarn ar vourrevien, met goure'hemen a reaz ma vije kaset d'eun enezen euz ar mor Mediterranee, enez Pathmos. Sonjal a rea: en enezen-ze, Ian na c'hello ober netra evit ar relijion gristen. Fazia a rea.

Eur vech en enezen, an Abostol koz en em roaz d'ar beden. Guelet a reaz ar baradoz digor dirak he zaoulagad, anaout a reaz an oll draou braz a dlle en em gaout gant an Iliz, divar neuze betek an deiz diveza euz ar bed, ha merka a reaz an oll draou-ze en eul leor kaer hanvet an Apocalyps. Al leor-ze a zo an diveza euz leoriou ar Skritur Zakr, bez' ez euz ennan kenteliou kaer dreist, met diez braz da entent. Eun doktor brudet euz an Iliz, sant Jerom, a lavar e kaver ennan ken aliez a vyster hag a c'her.

El leac'h m'eo bet soubet sant Ian en eol bero, ez euz bet savet eun iliz, evit digas da zonzj d'ar gristenien euz merzerenti an Abostol kalounek.

SONJOMP ERVAD :

Sant Ian a oa laouen o c'houzanv eur boan benag evit Doue, ha setu perak e velaz ar baradoz digor: Mab an den azezet var eun tron kaer ha skeduz; klevet a reaz kanouennou dudiuz ar zent hag an elez.

Nag a c'hrasou, nag a veritou a gollomp, defot n'on deuz muioc'h a basianted en hor poaniou. Gouzanvomp heb en em glem, abalamour da Zoue, hag e vezimp digollet mad; ne velimp ket, marteze, ar baradoz digor dirazomp er vuez-man, evel ma velaz sant Ian, met guelet a raimp anezan digor d'eomp evit an eternite. Seul dounoc'h on dezo santet eur pennad drean ar boan var an douar, seul dudioc'h e saourimp eürusdet mignouned Doue, hed an oll eternite.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Stanislas, Eskop ha Merzer

(1030-1079)

Ar zant-man a oa ganet e rouantelez ar Pologn, er bloaz 1030, en eur famill gristen, hag euz eul ligned huel. He dud a voestlaz anezan da Zoue kerkent ha ma teaz er bed, ha goudeze, dre ho fedennou hag ho skoueriou mad, he lakjont abred var hent an devosion.

Stanilas a zele'haz bepred he ene neat diouz ar pec'hed, hag a reaz plijadur ha joa he dud dre ma choumaz atao fur ha sentuz. Var he studi, e roe skouer vad d'an oll, dre an aked a ziskoueze da labourat ha da bedi; ha ne zaleaz ket da veza etouez ar re genta euz he oad.

Pa varvaz he dud, ho danvez braz a gouezaz etre he zaouarn; met evel m'oa distag he galoun euz madou ar bed-man, e rannaz anezo etre ar beorien.

Pa glevaz eskop Krakovi hano euz santelez ha gouiziegezh Stanislas, e c'halvaz anezan d'he gaout, ha pres-tik goudeze e roaz d'ezan an Urzou sakr; er memez amzer e kemenne d'ezan mont dre an eskopti da brezeg an Aviel. Dre he gomzou nerzuz, ar zant a c'hounezaz kalz eneo da Zoue, lakât a reaz zoken meur a bec'her kaledet da zistrei var an hent mad.

Pa zeuaz ar maro da eskop Krakovi, an oll a c'hou-lennaz Stanislas da eskop, met ar zant, dre humilite, a lavaraz nan; evelato, an Tad Santel ar Pab a reaz d'ezan plega. En amzer-ze, roue ar Pologn, Boleslas, a rene eur vuez direol meurbed, hag a rea kalz drouk dre ma roc a bep seurt skoueriou fall d'he bobl ha da dud he balez. Den n'en doa an hardizegezh da vont da lavaret ger d'ezan, rag an oll a c'houie peger kriz e oa. Met an eskop santel ne joumaz ket da vare'hata; he zever a oa mont da gaout ar roue, ha mont a reaz ken dispount ha tra, da bedi anezan da jench buez, ha da zonzal en he zilvidigezh.

Ar roue a reaz an neuz da zenti eur pennad amzer, met he dechou fall a deuaz buan da c'houit varnan adarre: neuze, dre zrouk ouz Stanislas, abalamour d'ar rebechou en doa great d'ezan, e klaskaz he zua, en eur damall anezan e gaou. Lavaret a reaz en doa an eskop kemeret, heb guir ebet, eur park da staga.ouz he iliz. Stanislas en doa testou gwest da lavaret en doa paet ar park-se d'he bere'hen, tri bloaz a oa, met an testou ne gredchont ket en em ziskouez, gant aoun rak ar Roue.

An hini a oa bet paet ar park d'ezan a oa maro eun tâchad a oa. Stanislas a iunaz hag a bedaz epad tri devez leun, da c'houde, ez eaz da gichen bez an den, hag e lavaraz: « En han' Doue, sav euz da vez, ha deuz da rei » testeni d'ar virionez. » Kerkent an den maro a zavaz, buez a oa ennan, mont a reaz gant ar zant betek al lesvarn; eno, dirak ar roue spountet oll, e komzaz evel-hen: « Tri bloaz a zo breman, em euz guerzet eur park

» da Stanislas, ha resevet em boa digantan priz ar » park, dirak testou. » Goudeze e tistroaz adarre d'he vez.

Ar roue na gredaz ket neuze koundaoni ar zant; met dere'hel a reaz drouk outan muioc'h eget biskoaz, hag en desped d'he c'hourdrouzou, e kendalc'haz da ren he vuez fall. O velet kement-se, Stanislas a exkummunugaz anezan; ar roue ne reaz van ebet, kendere'hel a reaz da vont en iliz pa bliche gantan. Neuze an eskop santel a ieaz d'he gaout evit an trede guech, hag a lavaraz d'ezan, ne lavarfe mui an oferen nag ar pedemou dirazan en iliz, ma na jenchfe ket a vuez. Ar roue a ieaz e kounnar ouz he glevet, hag a roaz urz d'he zoudardet da laza Stanislas antronoz pa vije o vont d'an iliz; met hini anezho na gredaz ober eun torfed ker skrijuz. Ar roue, neuze, evel eun den kollet gantan he benn, a generaz he gleze, hag en he gasouni, e lazaz ar zant ouz an aoter, p'edo oc'h oferenna. He varo eüruz a erruaz e miz mae 1079.

SONJOMP ERVAD :

Pa velomp unan benag oc'h ober an drouk, arabat d'eomp he skandalat, nemet dre zousder, gant aoun da lakât muioc'h a zrouk ennan c'hoaz; ober a rit-hu kement-se e kenver he pugale, e kenver ar re a zo dindannoc'h?

Eur guir gristen ne dle ket kaout aoun oc'h ober he zever, n'euz fors dirak piou e vefe. Sant Stanislas a zo eur skouer evidomp var gement-se: na grenaz ket evit mont da lavaret d'eur roue ne rea ket mad, hag e llic chench buez. An ebestel ive a oa dispount dirak an dud kriz euz ho amzer: m'o dije krenet diraco, piou en dije savet an Iliz? D'ho tro ive, diskouezit oc'h dispount, ha guir ziskibien Jesus-Christ, p'o pezo leac'h da anzaio ho feiz.



AN EIZVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Mikeal, var menez Gargan

Sant Mikeal eo prins an elez mad, an tosta da Zoue er baradoz, abalamour m'en deuz trec'het Lusifer. En em ziskouezet eo d'an dud avechou.

Er bloaz 492, en Itali, e kear Siponto, e veve eun den, brudet braz, hanvet Gargan. Kalz a chatal en devoa o peuri tost d'eur menez. Hogen, eun deiz, eun taro a dec'haz kuit euz ar vanden, hag a redaz etrezek ar menez. Gargan, gant he vevelien, a redaz var he roudou, ha pa oue kavet gourvezet dirak eur c'havarn, unan a laoskaz var al loan eun tenn bir: met ar bir a zistroaz var an der en devoa he dennet, hag a c'hlazaz anezan. Gargan hag he vevelien a joumaz souezet maro, o velet eun dra ker burzuduz, hag a zistroaz d'ar gear. Ar vrud euz a gement-se a redaz buan dre ar vro, hag an oll a oue lakeat nec'het, o klask gouzout petra a verke ar burzud-se.

Mont a rejot neuze da gaout eskop kear. An Aotrou 'n Eskop a gemennaz d'he bobl iun epad tri devez, ha dont d'an iliz gantan da c'houlenn sklerijen digant Doue.

Abenn an trede devez, Sant Mikeal en em ziskouezaz d'an eskop: « Me eo, emezan, a zo o veilla var ar c'ha- » varn-ze, ha goulenn a ran ma ve savet eno, em hano » d'in, eur japel en honor da elez ar baradoz. » Neuze an Aotrou 'n Eskop a iez di e prosesion gant he veleien hag he bobl: lavaret a reaz an oferen er c'havarn, hag e roaz ar gommunion da galz a dud. Da c'houde, e oue savet eur japel hag ar burzudou a c'hoarvezaz eno a verkaz mad d'an oll e oa bet e guirionez en em ziskouezet sant Mikeal da eskop Siponto. Azalek an devez-se, kristenien a ziredas, a vilierou, da venez Gargan, da lavaret ho c'harantez d'an arc'heal benniget.

Er Frans ive, sant Mikeal a oue henoret abred: en

em ziskouez a reaz er bloaz 709 da zant Aubert, eskop Avranch. An eskop santel-man en em blijje oc'h en em denna var eur garrek vraz pe eur menez a zo er mor, etre an Normandi ha Breiz. Di e teue evit diskuiza euz he labour a eskop, o sonjal e Doue hag e silvidigez he ene. Eno eun deiz, sant Mikeal en em ziskouezaz d'ezan, o c'houlenn ma savje eun iliz en he honor var ar menez-se, evel m'eh devoa unan var menez Gargan en Itali. An eskop, o sonjal en devoa hureet marteze, ne reaz seurt ebet, met en em rei a reaz da bedi muioc'h-mui. Hogen a-benn eun nebeut deveziou, an Arc'heal en em ziskouezaz d'ezan adarre: an eskop a gavaz guelloc'h gortoz c'hoaz, ha goulenn atao sklerijen Doue. Sant Mikeal a deuz neuze dirazan eun trede guech: he c'hourdrouz a reaz en dro-man, ha gant he vez, e lakeaz d'ezan eur gleizen doun en he benn. Sant Aubert, en taol-man, na argilaz mui; o veza embannet komzou sant Mikeal, e teuz gant he veleien, hag eur bobl vraz a dud e prosesion d'ar menez. An iliz a oue savet ha konsakret; dizale e oue brudet.

O veza ma c'hoarveze kalz miraklou var ar menez-se, hanvet **Menez Sant Mikeal e riskl ar mor**, e oue savet divezatoc'h, var ar roc'h, eun iliz all e plas an iliz kenta, gant eur gouent euz ar re vrasa: kouent hag iliz a zo burzuduz, ker kaer ha ker koant int.

An Tad Santel ar Pab Pi IX, er bloaz 1875, a aotrez kuruni skeuden sant Mikeal; goueliou braz a oue great neuze, hag abaoe, devosion hor Bro Frans evit an Arc'heal eüruz a zo evel nevezet.

SONJOMP ERVAD :

En eur velet renk huel Sant Mikeal dirak an Aotrou Doue, sonjomp ervad en deuz gounezet ar plas kaer-ze en eur stourm ouz Lusifer. Ni ive, goulennomp beza evel dan kurunet a c'hloar, en eur ziskouez hon ners-kaloun evel dan. « Rak den » ebet, eme an abostol sant Paol, na vezo kurunet nemet » stourmet en defe. » Rak-se, dispennomp he roudou, kemeromp guiskamant bugale Doue, ha stourmomp enep Satan, enebour touet hon eneou, enep plegou fall ar bed, hag eneb hor plegou fall hon-unan.

Ha stourmet hon euz-ni betek vremen?

AN NAVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Gregor a Nazianz, Eskop

(325-389)

Gregor a oa ginidik euz kear Nazianz er C'happados; karet a reaz Doue a vianik, ha kerkent ha ma ouezaz lenn, e poaniaz da zeski muioc'h-mui. Dre ma tene da anaout guelloc'h an Aotrou Doue, e klaske ive plijout d'ezan; tec'het a rea guella ma c'helle diouz ar pec'hed, ha beilla a rea var he oll skianchou. Komz a reaz re eun devez, ha kerkent e choumaz c'houec'h sizun heb kaozeal, lavaret a rea ar c'homzou a oa red, ha netra ken.

Kaset e oue da gear Athen da bevrachui he studi, hag eno eo e reaz anaoudegez gant sant Bazil: dont a rejont heb dale da veza daou vignoun braz. N'o doa etrezo nemet eur galoun, hag ar pez a rea poan pe blijadur da unan, a rea ive poan pe blijadur d'egile; prest e vezent atao d'en em zikour, d'en em glevet evit ober ar mad. Ho mignouniach a oa ker santel, ma c'hell beza roet da skouer d'an holl dud iaouank.

Pa zistroaz d'he vro, Gregor a resevaz an Urziou sakr, ha goudeze ec'h en em lakeaz da brezeg ar feiz: eur maread tud a zirede d'he glevet e peb leac'h, ha kement a vrud a zavaz anezan, ma lavare an oll e oa eur prezeger dispar.

Nebent amzer goudeze, sant Bazil, dija arc'heskop e Sesaree, a zakraz he vignoun eskop e Sasim, met eskop Nazianz, koz dija, a c'houlennaz anezan evit he zikour da c'houarn he eskopti, ha Gregor a zentaz outan. Eno dreist oll e roaz da anaout he furnez hag he c'houisiegez vraz, ha setu perak e oue hanvet da eskop ha da batriarch e Konstantinopl. Er garg nevez-se, en devoue kalz poaniou da c'houzav aberz an heretiked; met dre

he basianted hag he garantez, e c'hounezaz meur a hini anezho da Zoue, hag e reaz d'ezho heuil adarre ar religion gristen.

Pa velaz ar gosni o tont, hag he nerz o vont digantan, ar zant a roaz an dilez euz he garg, goude beza lakeat peb tra en urz en he eskopti. Distrei a reaz adarre d'ar vro ma oa ganet, hag eno ez eaz en eun ti var ar meaz, evit beva didrabas, o sonjal e Doue. Kalz amzer a dremene bemdez er beden, ha goudeze e kaye c'hoaz an tu da skriva levriou kaer var guirioneziou ar feiz: he skridou a zo eun tenzor pinvidik evit an Iiz.

Doue a c'halvaz anezan d'he varadoz, var dro ar bloaz 389: eur gurunen zispar en doa gounezet dre he zantelezh hag he oberou mad.

KENTELIOU SANT GREGOR

I. — Sonjal a dleomp hep ehan e Doue, p'eo guir ema bepred oc'h asten d'eomp hor buez, hag o rei deomp he c'hra-sou.

II. — Evel m'eo unanet ar c'horf hag an ene, evel m'eo stag ar skour ouz ar vezen, evelse e tleomp beza unanet gant Doue. Ar c'horf a deu da vreina pa vez dispartiet diouz an ene, ar skour a deu da zec'ha pa vez distag diouz ar vezen: hon ene ive pa vez distag diouz Doue, dre ar pec'hed, a zo en eur stad truezusoc'h c'hoaz.

III. — Kant guech guelloc'h eo da eun den rei peoc'h eget gourdrouz, pa vez drouk ennan.

IV. — Mar fell d'eomp beza mestr var hon teod, en em voazomp da jom heb komz avechou.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, abalamour ma zonje beza komzet re eun devez, a joumaz goudeze, epad c'houec'h sizun, heb lavaret an distera ger. Ma na fell ket d'eoc'h beza kastizet er bed-man pe er bed all, lakit evez ive ouz ho komzou: dreist oll ouz ho malloziou eneb Doue, ouz ho trouk-prezegerezh eneb an nesa.

Sant Gregor, daoust ma oa klanv, ha dinerzet gant ar gozni, a dremene evelato kalz amzer o pedi, ha c'houi mar-teze evit an distera poan, evit an distera klenved, a laosk a gostez ho pedennou hag ho teveriou a gristen.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Antonin, Eskop

(1389-1459)

Ar zant-man a zo ganet e Florans, en Itali. Kement a spered en doa, ma teske ar pezh a gare; ha d'an oad ma vez ar vugale all peurliesha er skol, hen a oa desket aoualc'h evit ober skol d'ar re all. Labourat a rea evit plijout da Zoue, ha netra ken, hag aliez e lavare: « Na » fell d'in, o va Doue, nemet ober ho polontez. » Goude he labour, e veze kavet dalc'hmad o pedi en iliz.

D'an oad a c'houezek vloaz, e oue digemeret en Urz Sant Dominik, hag eno e oue beleget. Neuze dreist oll e tiskouezaz pebez karantez tener en doa evit Doue: dioc'h ar mintin e save abred evit ober he bedennou, ha bep tro ma pigne ouz an aoter, e teue an dour en he zaoulagad. Divezatoc'h e oue lakeat da vestr en eur gouent e Roum, ha neuze evit dougen ar venec'h da heuil mad ar reolen, ee'h heuille anezi he-unan da genta; evitan da veza savet hueloc'h eget he Genvreudeur, ne ehanaz d'ober pinijen: kouskat a rea bemdez var ar c'hoat kalet, evit kastiza he gorf.

Ar vrud euz he zantelez hag euz he garantez evit Doue a ieaz betek ar Pap Eujeen IV. O sonjal er vad a c'helfe ober en eun eskopti, ar pab a hanvaz anezan da eskop e Florans. Met ne felle ket d'ezan kemeret eur garg ker pounner var he ziouskoaz, rak n'en em gave ket guest aoualc'h, var he veno. An Tad Santel ar Pab a lavaraz d'ezan e ranke senti p'eo guir e oa bolontez Doue; neuze goude beza skuillet kalz a zaelou, e plegaz, hag e oue sakret eskop er bloaz 1446.

E kreiz al labourou tenn euz he garg, e kendalc'has bepred da heuil reolen Urz Sant Dominik, ha d'ober

pinijen. Ar pezh en doa a zanvez a roaz d'ar paour; hag ouspenn, e savaz eur gouent nevez, hag e lakeaz daouzek gouarner enni, karget da ranna d'ar beorien an aluzennou a c'helfe d'ober. Ar gouent-se a zo atao en e zav, ha sikour a ra tûd c'houec'h kant tiegez paour d'en em vaga, ha d'en em viska.

Ar zant, he unan, a veille guella ma c'helle evit ma vije roet da bep hini hervez he ezomou, ha setu ama petra lennomp en he vuez:

Eun devez daou zen dall a oa o klask an aluzen, hag o sonjal ne oa den ebet en ho c'hichen evit ho zelaou, unan anezo a lavaraz d'egile: « M' em euz ouspenn » daou c'hant skoed en aour dastumet divar an aluzen, » hag e meuz griet anezo em boned. » — « Ha me, eme » egile, em euz tri c'hant griet em jiletan! » An eskop o veza klevet komz euz an dra-ze, a c'halvaz an daou zen d'he gaout, hag a c'hourdrouzaz anezo, en eur rei d'ezo da entent pegement a c'haou a reant ouz ar guir beorien dre ho avaristed. Tenna a reaz diganto an arc'hant o doa, evit he ranna d'an dud ezomek. Maga a reaz he-unan an daou baour-ze da c'houde.

Var a leverer c'hoaz, eun devez all ar zant-man p' edo o tremen dre eur ru e kear, a velaz eun eal var c'horre eun ti; mont a reaz en ti-ze, hag e kavaz eno teir vere'h iaouank hag a labourer noz-deiz, koulz lavarret, evit goumit ho bara, ha maga ho mam klanv var he guele. Gant truez outo, an eskop santel a lakeaz rei d'ezo ar pezh o doa ezoum evit beva easoc'h. Met abenn eun nebeut amzer goude, pa zeuaz en dro, e choumaz souezet-marzo o velet an drouk-spered var c'horre ar memez ti. Entent a reaz petra oa c'hoarvezet: an teir vere'h iaouank oc'h en em gaout re en ho eaz, na felle d'ezo mui labourat, hag a oa o vont d'en em goll dre ho leziregez. An eskop a reaz kercent bianât ho aluzen.

En despet d'an tregas en doa gant he eskopti, Antonin a gavaz amzer da skriva levriou santel, ha leun a furnez.

Doue he c'halvaz euz ar bed-man d'he zek vloaz ha tri-ugent; mervel a reaz en eur boket d'he grusif, er bloaz 1459.

SONJOMP ERVAD :

Tud paour, ne gemerit ket ho paourentez evit eun drouk pe eur gualheur, rak easoc'h eo d'eoc'h ober ho silvidigez gant ho paourentez, eget ne deo d'ar pinvidik gant he oll vadou. Ar baourentez, gouzanvet a galoun vad, a c'hell ho sikour kalz d'en em zavetei.

Pa labourit evit maga ho korf, na zizonjit ket hoc'h ene; keit ha ma roio Doue nerz ha iec'hed d'eoc'h, bezit troet var al labour, rag Doue a c'hour'hemen d'an oll poania ha labourat er bed-man.

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Ar Plac'hik Eüruz Imelda

(1321-1333)

Ar vere'h santel-man, maro en he daouzekved bloaz, dre nerz he c'harantez evit Jesus e Sakramant an Aoter, a zo skouer hag alvokadez bugale ar pask kenta.

Imelda a zo ganet e kear Bologn, en Itali, er bloaz 1321. Savet mad e oue gant he zud, ha d'he dek vloaz, pa ne zonzj ar merc'hed bian all nemet er c'hoariou, hi a c'houlennaz mont d'eur gouent euz a Urz sant Aogustin, evit gellout servicha Doue didrouoc'h ha parfetoc'h. He zud a asantaz.

Guisket e oue e leanez, ha divar neuze e oue hanvet Imelda. D'ar mare-ze e resevet er c'houchou meur a grouadur, roet e veze d'ezo guiskamant al leanezed, met na heulient nemet eul loden hebken euz ar reolen, ha na c'hellent ober **profession** nemet e bar ho iaouankiz. Imelda, leun a garantez evit Doue, a heuillaz ar reolen penn da benn; al leanezed kosa o doa evel avi outi. Sevel a rea ken abred hag ar re all, respount a rea d'an oll bedemou, ken aliez e iune hag al leanezed a oa e

bar ho brud, kastiza a rea he c'horf, ken tener goulskoude, dre ar binijennou merket er reolen.

Peb den a galoun var an douar-man, a gar muioc'h tra pe dra; peb sant a zo en em roet d'eun devosior dreist ar re all; devosion Imelda a oa Jesus e Sakramant an Aoter. Bep mintin, pa gleve an oferen, e veze beuzet he ene en eur mor grasou; an daelou a skuille neuze, a zisklerie aouale'h he c'harantez.

Da vare ar gommunion zantel, daelou Imelda a rede puilloc'h c'hoaz; dudiuz e kave gullet Jesus oc'h en em rei evel magadurez d'he C'hoarezed. Karet e defe, hi ive, kaout an eürusdet-se, reseo Jesus er gommunion, met re iaouank e oa c'hoaz. Da c'hortoz ma c'helje reseo Jesus, he brasa plijadur a oa choum pell hag hir da bedi var an deiz, daoulinet dirak an tabernakl; komz a rea d'al leanezed all euz he muia karet, goulen a rea: « Daoust penaoz e c'heller ober evit reseo Jesus er » galoun, ha choum heb mervel? »

Kement a vall e doa da reseo ar gommunion zantel, ma c'houlennaz digant ar beleg ober he fask kenta d'he daouzek vloaz, met lezennou an Iliz a oa striz, d'ar mare-ze, en Itali: « D'ho pevarzek vloaz, emezan, e » c'helfoc'h ober ho pask gant ar re all. » Ar vere'hik a blegaz he fenn.

Deiz ar Iaou-Bask euz ar bloaz 1333, Imelda a zantaz he c'haloun o vervi, muioc'h c'hoaz eget en deveziou all, gant tan he c'harantez: goulen a reaz a nevez digant beleg ar gouent rei d'ezi gras kaer ar pask kenta. « Divezatoc'h, emezan. » Imelda a zoublaz da volentez Doue, met he c'haloun a oa rannet.

Pa zeuaz mare ar gommunion, al leanezed a zavaz hini hag hini, hag a iez gant ar brasa devosion da reseo korf Hor Zalver. Imelda a joumaz e traon ar japel, met he feden a nijaz betek an aoter: « O va Jesus, perak 'ta » ne zelaouit-hu ket erfin peden an distera euz ho ser- » vicherezed? Lavaret a reer d'in ne doum nemet eur » c'hrouadur. Guir eo, met daoust ha n'eo ket c'houi » o peuz diskleriet en Aviel: List ar vugale da zont » beteg ennon. O va c'harantez! roit d'in eur vruzunen

» euz ar bara a vuez, eur vruzunen hebken, pe laoskit » ac'hanoun da vervel. »

Daelou Imelda a rede dre ma pede, ha setu padal eun hosti o sevel euz ar **sibouer** a oa etre daouarn ar beleg, hag o nijal dreist ar c'hœur, evit chom azioc'h penn ar c'hrouadur. Imelda a vel an hosti adreuz he daelou, hag a bed startoc'h c'hoaz. An hosti a joun en ear, heb sikour den; al leanezed, estlammet oll, a ziskuill ar burzud d'ar beleg; hen neuze, pa anavezaz bolontez an Aotrou Doue merket ker sklear d'ezan, a roaz an hosti zantel d'ar c'hrouadur.

Pebez levenez evit Imelda! Trugarekât a reaz Jesus euz he oll ene, euz he oll galoun, euz he oll nerz; he daouarn kroaziet var he feultrin, he daoulagad sarret, he muzellou gour-zigor, a lavarq sklear e oa beuzet e Doue. Choum a rea pell heb flach, heb finval, evel kousket mik, ha den na grede da genta he dihuna; evelato, al leanezed a c'halvaz ar vere'hik, a douchaz outi: van ebet atao. Savet e oue erfin divar he daoulin... maro e oa, maro dre nerz he c'harantez!

SONJOMP ERVAD :

Nag eüruz eo bet mam Imelda, o veza m'e deuz desket abred d'he merc'h karet an Aotrou Doue! Ha c'houi, tadou ha mammou, hag ober a rit-hu ho tever evel di var ar poent-se? Spered ar c'hrouadur a zo digor kalz abretoc'h eget na zonzjer peurliesia. Pell zo abaoue m'hen deuz lavaret ar Pab santel Pie X ober d'ar vugale kommunia abred kaer; ha poania a rit-hu da zeski ho c'hreansou d'ho pugaligou?



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Neree, sant Akilee ha santez Domitilla

Merzerien

Neree hag Akilee a oa daou vreur, bet lakeat abred da zervicha e ti ar brinsez Domitilla. An Abostol sant Per ho gounezaz d'ar feiz, hag ho mestrez ganto.

Domitilla, o velet ho lealdet, a lakeaz he fizianz enno, hag ho zavaz e penn offiserien he falez; er zonzj e oa, neuze, da zimezi d'eun den iaouank pinvidik hanvet Aurelian. An daou zervicher santel-man a gare kalz ho mestrez, hag o doa aoun na vije kollet gant henoriou ha madou ar bed: mont a rejont eta d'he c'haout, da lavaret d'ezhi peger berr ha pegen goull eo plijadureziou hag henoriou ar bed-man, ha pegen didalvez eo ar madou-ze, evit ar baradoz. Lakât a rejont dirak he daoulagad ar poaniou a gaver e stad ar briedelez, hag ar peoc'h a gaver e stad ar guere'hded kristen, o servicha an Aotrou Doue hebken. O klevet ho c'homzou ker fur, Domitilla a jenchaz mennoz, hag a reaz he zonzj da joun atao guere'hez.

Diskleria a reaz he c'hoant d'ar Pab sant Klemant, hag hen a lavaraz d'ezhi: « Ha sonjet mad o peuz er pez » a rit, hag er riskl a zo evidoc'h o trei kein da Aurelian? » Gouzout a rit e vezo drouk braz emman, ho tiskuill a » raio, evel kristenez, d'an impalaer paian, hag e » maoc'h marteze e riskl da veza lakeat d'ar maro. » « — Ia, emezi, sonjet em euz en dra-ze, ha ne c'hou- » lennan ket guell eget beza merzerez; gouzout a ran » oun sempl, ha ne c'hellan ket fiziout var va nerz va- » unan. Va fizians a lakan en Oll-C'halloudek hebken. » Neuze ar Pab, o velet he nerz kaloun, a roaz d'ezhi goel ar guere'hez.

Ne zaleaz ket da zont da vir, ar pezh en doa diskleriet d'ezhi ar Pab sant Klemant: Aurelian, drouk ennan, o velet ne felle mui d'ar brinsez Domitilla dimezi gantan, a redaz d'he diskuill d'an Impalaer; er memez amzer e tiskuillaz ive Neree hag Akilee, rag gouzout a rea er vad eo hi o doa aliet Domitilla da jom heb mont gantan.

Kerkent e oue great ho frosez d'an daou vreur kristen: ar barner a roaz urz d'ezo da adori an doueou faoz; met an daou vreur, kennerzet gant gras Doue, a lavaraz dioc'htu ne rajent biken eun hevelep tra, enep ho feiz hag enep an honor dleet da Zoue. Ar barner didruez a lakeaz ho dibenna var an heur: ho merzerenti a zigouez d'an 12 a viz mae.

Domitilla, pa anavezaz maro kaer he daou zervicher mad, na fallgalounaz ket; e leac'h kaout aoun ha krena, ee'h en em zante dispount, ha gwest da zispenn ho rondou. Aurelian a zeuaz adarre d'he c'haout, hag a reaz kement a oa en he c'halloud evit he distrei hag he gounit; met koll a rea he boan: hi a jomne startoc'h eget biskoaz en he feiz, hag er veu e doa great da jom atao guere'hez.

O velet na c'helle ket dont a-benn anezi, Aurelian a reaz eun nosvez, lakât an tan en he zi. Ene ar zantez a bignaz var eun d'an env, euz a greiz ar flammou, evit reseo an diou gurunen e doa gounezet dre he guere'hded hag he merzerenti, var dro ar bloaz 95.

SONJOMP ERVAD :

Domitilla, o klevet lavaret peger buan e tremen madou ha plijadureziou ar bed, a gavaz guelloc'h en em rei da zervich Doue hebken.

Ni ive, servichomp Doue araok peb tra.

An arc'hant na ro ket an eürusted, rak an dud pinvidika o deuz soursi ha tregas; ar plijadureziou fall o deuz eun distag c'houero, hag a deu ar boan d'ho heul; an honoriou ne dint nemed eur bouill moged. E servich Doue hebken, e kavigimp ar guir eürusdet.



AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Briek, Eskop

Sant Briek a zo ganet prestik goude ar bloaz 400, e Bro Zaoz a hanver ive Breiz Vraz. He dud a heuille relijion ar baianed.

Briek, daoust d'ezhan da veza paian, a oa eur paotr fur. Pa deuaz sant Jermen, eskop Auxerr, da sklerijenna Breiziz, ar paotr iaouank a zelaouaz he genteliou, hag a heuliaz anezan er Frans, d'an distro.

E skol sant Jermen Briek a iezaz buan var araok: he spered a oa digor; sônj mad a zalc'he euz an traou en doa desket; ouspenn-ze, aketuz e oa da bedi Doue d'he sklerijenna. Sant Jermen o veza distroet da Vro-Zaoz er bloaz 447, a gasaz gantan eun nebeudik euz he ziskibien; en ho zouez e oa Briek, beleget neuze.

Ar beleg iaouank a iezaz da genta da di he dud, bez' en devoe an heur vad da zigeri d'ezo ho daoulagad var guirionez al lezen gristen; goude-ze, e reaz d'ar peb brasa euz ar c'harteriz heuil relijion Jesus-Christ. Neuze e savaz eur gouent, rei a reaz digemer d'ar baotred iaouank a oa dent da zelaou he genteliou, hag heb dale en devoe eun toulladik brao a venee'h da ren var hent ar zantelez.

Choum a reaz epad eur maread bloaveziou e penn ar gouent, met eun nosvez, da c'houel braz ar Pantekost, e klevaz mouez eun eal o lavaret d'ezan dre he gousk: « Den Doue, red eo d'id' treuzi ar mor, evit kas da bo- » blou all relijion Jesus. » Kerkent ha goulou deiz, ar zant a vodaz he venee'h, hag a lavaraz d'ezo: « Galvet » oun gant Doue da gas sklerijen ar feiz da vroiou » all. » Eiz manac'h hag eiz-ugent a zavaz gantan en eur vag, hag a gerzaz varzu Breiz-Izel.

Douara a rejont tost d'al leac'h m'ema brema Sant-Briek. Ar zant a gavaz heb dale eur feunteun dour sklear, koajou braz, eul leac'h sioul ha didrouz, setu ma lavaraz raktal: « Kredi a ran eo bolontez an Aotrou » Doue e choumfemp ama. » An oll a stagaz neuze d'al labour, ar guez braz a oue pilet, die'hrozet gant ar vouc'hal, tiez bian a oue great, eun iliz a oue savet. Da c'houde, ar venec'h a dorraz an douar tro var dro, heb aon rak den; mestr ar vro, ar c'homt Rigall, en doa lavaret da Vriek: « Labourit kement ha ma c'helloc'h a zouar. »

Eno neuze, sant Briek a renaz he venec'h gant furnez; amzer an oll a veze rannet etre ar studi, ar beden, hag al labour. A nebeudou, tud ar vro a dosteaz ouz ar gouent, a deuz da zeski labourat gant ar venec'h; gullet e oue parkeier pinvidik e plas ar c'hoajou hag an douarou gouez. Dre ma veze great tiegeziou nevez, e poaniet ive da zével ilizou all; hiniennou euz ar venec'h a veze neuze kaset gant ar zant da ober labour Doue en ilizou-ze.

D'ar mare-ze, e kreder eo bet savet Briek e renk an eskibien, met he garg a eskop na vire ket outan da gemeret soursi gant he venec'h.

Eun devez m'oa eat ar zant e karr da velet eur gouent nevez, e tistroe d'ar gear en eur gana meuleudi da Zoue, pa zilamaz bleizi kounnaret euz eur c'hoat braz. Ar venec'h a valec araok ar c'harr a dec'haz dioc'htu, spountet oll, met Briek, pa velaz ar bleizi prest da zailla var an ejenned starnet oc'h ar c'harr, a zavaz he zourn, ha kerkent ar bleizi a joumaz reiz evel chas don. Ar venec'h, dispount neuze, a deuz var ho c'hiz, hag a glaskaz dont betek ar c'harr; met ar bleizi a ziskoueze beza e kounnar outo. Epad ma oa ar venec'h nec'het-marzo, paianed euz a Vreiz Vraz, douaret demdost eno, a zigouezaz var ar leac'h; estlammet o velet ar zant azezet ker seder ha tra en he garr, dispount dirak al loened gouez-se, e leverjont: « Tad, ho » kreden a vezo hor c'hreden, roit d'eomp ar vadianziant. » Neuze Briek a reaz d'ar bleizi mont kuit, hag

hi a zentaz raktal: ar baianed a zalc'haz mad d'ho ger, kenteliet e ouent epad eiz dez, ha badezet da c'houde.

Sant Briek a varvaz koz-braz, goude beza resevet he zakramanchou.

SONJOMP ERVAD :

Klevet a reer bemdez tud o lavaret: « Ar venec'h a zo » tud didalvez: na ouzont netra, na reont netra. » Eun den digristen, met gouiziek bras var histor an amzer guechall, a respount: « An eskibien hag ar venec'h eo o deuz great ar » Frans, hi eo o deuz he great, ker guir ha ma ra ar guenan » ho mel. » Hag e guirionez, piou o deuz torret an douar ha desket d'an dud labourat, great pinvidigez ar vro? Ar venec'h. E pe leac'h eo bet miret ar Skritur Zakr, skridou ar zent hag er memez amzer skridou kaera ar baianed gouiziek? Er c'houdenhou. E pe leac'h e veze great skol guechall? Er c'houdenhou. Ar venec'h n'int bet biskoaz na dibreder na didalvez.

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Bonifas, Merzer

En amzer an impalaer Maximian, pa lakeat ar gristenien d'ar maro a ganchou hag a villeron en Asie, e veve e Roum eun itroun vraz, hanvet Aglae, hag a rene, abaoe pell amzer, eur vuez fall gant he mestr mevel, Bonifas. Heman a oa goall droet var an eva, met douget e oa d'ober vad d'an dud paour: mont a rea betek ho c'hask var an hent en noz, evit rei sikour d'ezo. Ar perz mad a oa e Bonifas a reaz da Zoue kaout truez outan.

Eun devez Aglae a glevaz en he c'haloun, mouez Doue o lavaret d'ezi chench buez. Hag hi ha gervel he mestr-mevel: « Bonifas, emezi, gouzout a rit emamp

» var an hent fall. Klevet em euz ar gristenien o lava-
 » varet: ar pec'her a ro sikour d'ar verzerien, pe a rent
 » honor d'ho relegou, a resevo gras ar pardoun digant
 » Doue. Kea eta d'an Asie, eno e veler merzerien bemdez.
 » Te ho zikouro, sebelia a ri ho e'horfou, hag e tigasi
 » d'in eul loden benag euz ho relegou; me a zavo eur
 » japel gaer evit ho honor. Evelse e lakaimp Doue da
 » veza trugarezuz en hor e'henver. — Mad, itroun, eme
 » Vonifas, met me ho ped: ma tigaser d'eoc'h va rele-
 » gou evel relegou eur merzer, grit d'ezo ive eun dige-
 mer a honor. »

Ha Bonifas en hent, gant pevar pe bemp mevel all
 euz an ti. Hed he veach e tistroaz, meur a vech, emañ
 he-unan da zonzal er vuez direol en doa renet, hag er
 e'hefridi santel ma oa karget da ober: ne falvezaz
 d'ezan na dibri kig nag eva guin en hent.

Pa oue digouezet e kear Tars er Silisi, e kuiteaz he
 gompagnunez, hag ez caz var eün da blasen kear. Edot
 o verzeria eun niver braz a gristenien: eno e velet an
 oll benvienn skrivuz a oa o tispenn ho e'horfou, eno e
 velet ober d'ezo kement seurt iudazerez a e'hell gou-
 zant eun den: lod a zeve en tan, lod all a veze bourrevet
 a nebeudou, lod all a e'houzanve eur maro trum.

Ar vourevien a bec'he; ar verzerien a bede.

Bonifas a bokaz gant doujans da e'houliou ar verze-
 rien: « Na e'honi a zo eüruz, emezan, da e'houzant poa-
 » niou abalamour da Zoue! Kendalc'hit! Na kaera ku-
 » runen oc'h euz da gaout digantan! Nag eüruz e vefen
 » me ive ma plijfe gant Doue rei d'in ar e'hras da veza
 » merzer evel d'oc'h! Servicherien Jesus, pedit en han-
 » Doue! pedit evidoun. »

Ar gouarner, o veza guelet Bonifas o sikour ar ver-
 zerien, a reaz he zigas dirazan, hag a gemennaz d'ezan
 » kinnig ezanz d'an doueou: « Nan, emezan, kristen
 » oun, Jesus-Christ eo va mestr, biken ne anavezin
 » Doue all ebet. Etre ho taouarn emañ, grit d'in ar
 » pez a garfot. »

Neuze ar gouarner a roaz urz d'he zispenn gant skil-
 fou dir; sanket a oue tachou lem-lem dindan he ivinou,

hag e oue taolet en he e'hinou ploum bero teuzet. E
 kreiz he boaniou, ar merzer ne laoske ket eur glemma-
 den; sellet a rea ouz ar verzerien all, ha da e'houde e
 save he zaoulagad etrezek an env, en eur lavaret: « Mill
 » bennoz d'eoc'h, o Jesus, mab Doue, roit d'in nerz da
 » e'houzant betek ar maro. »

Antronoz, Bonifas a oue taolet var he benn en eur
 gaoter pek bervet, heb kaout an distera drouk. Ar
 gouarner, o velet na e'helle ket dont a-benn anezan, a
 roaz urz d'he zibenna. Evelse e e'houezaz Bonifas he
 gurunen a verzer, er bloaz 290.

Epad bamedigez ho mestr, ar mevelien a oa eat da
 entent ouz ho e'hezek, hag a zeuaz da glask Boni-
 fas, met ober a rejont tro kear heb he gaout. Antron-
 noz e klevjont lavaret en doa roet he vuez evit Jesus-
 Christ. Prena a rejont he gorf evit hanter kant skoed;
 hen digas a rejont d'an Itali, d'ho mestrez. Aglae a oa
 var e'hed anezo: eun eal en doa diskleriet d'ezi merze-
 renti kaer he mestr-mevel. Digemeret a reaz gant ar
 brasa devosion korf ar merzer; ober a reaz sevel d'ezan
 eur chapel pinvidik.

SONJOMP ERVAD :

Meulomp Doue da veza ket ken trugarezuz e kenver ar
 zant-man. Rei a reaz d'ezan grasou ker braz, ma teuz an
 den fall, ar mezier touet, da veza, en eun taol, eur merzer,
 eur zant. Bonifas a dennaz varnan trugarez an Aotrou Doue,
 dre ar garantez en doa evit ar paour, dre he vadelez d'he
 zikour; ouspenn-ze, pinijen a reaz, hed he veach, da e'hou-
 len digant an Aotrou Doue kaout truez outan.

Kristenien, kemeromp skouer dioutan, torromp a grenn
 hor boazamanchou fall, ha pedomp Doue d'hor zikour. Be-
 zomp trugarezuz evit hon nesa, hag e velimp ive Doue, en
 he drugarez, o skuill varnomp grasou hag a raio ac'hanomp
 kristenien zantel.



AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Ian-Vadezour ar Zall

(1651-1719)



Ar zant-man a oa ganet e Reims er bloaz 1651; he dud a oa pinvidik.

Azalek he vugaleach e tiskouezaz dre he oll vuez, e oa galvet gant Doue d'en em rei d'he zervich, ha da veza eur skouer a zantelez evit an oll. Ober a reaz he studi e skoliou Reims, ha d'ar mare-ze daoust ma oa karet gant an oll abalamour d'he galoun vad ha d'he zousder, ez ea aliez en eur c'horn benag, evit sonjal mad en Aotrou Doue. Deski a rea buan, abred-kacr e oue digemeret da gloarek; ha d'he zeitek vloaz, e oue hanvet chaloni e Reims. Da Baris ez eaz da zeski an theoloji da skol veur ar Sorbonn, hag ac'hano da zeminer braz Sant-Sulpis; met dizale, he dad hag he vam o veza deut da vervel, Ian-Vadezour a rankaz distrei d'ar gear, evit soursial ouz he vreudeur a oa e'hoaz bian. He oll aket a lakeaz da rei dezo eur gelemmadurez gristen. met ne ehane ket da studia he unan er gear.

Goude m'en devoue savet mad he vreudeur, ar zant a ieaz da reseo an Ursiou: beleget e oue er bloaz 1678. Entent a reaz, eun dervez, pegen dizesk e oa, en amzer-ze, bugale ar beorien hag an dud divar ar meaz, setu ma kemeraz truez outo. Klevet a rea, en he galoun, mouez an Aotrou Doue o lavaret: « Ar vugaligou geiz a c'houl-len sklerijen, ha n' euz den da entent outo. »

Divar neuze e reaz fae var madou hag henoriou ar bed-man: dilezel a reaz he garg a chaloni, guerza a reaz he zanvez evit rei ar priz anezo d'ar beorien, poania a reaz da gelen ar vugale dizesk; dizale e savaz Urz ar vistri skol gristen.

Enebet e oue outhan er penn kenta: an dud, betek zoken he vignoned hag he gerent, a rea goab anezan evel euz eun den eat he skiant vad diganathan. « Poania » a rin, emezan, betek ar maro, evit an eneoù keiz! — Doue a skuillaz he vennoz varnan, benniget e oue ive gant ar pab Beneat XIII, hag ar zant a deuz a-benn, var bouez poania heb ehan, da zevel dre ar vro eun niver braz a skoliou.

Ne lakea morse mestr ebet e penn eur skol nemet goude m'en deze he velet; hen a zeske d'he vistri pegen huel eo ar garg fzieta emmo aberz an Aotrou Doue, hen eo a verke d'ezo ho deveriou, hag an doare da hencha an

eneou varzu ar baradoz. Kerkent ha m'en deze kelennet mad he vistri skol, Ian-Vadezour a verke da bep hini he labour, en eur lavaret: « Nag eüruz oc'h-hu da zeski » al lezen gristen d'ar vugale ha da ober katekiz » d'ezo bemdez! »

He skoliou a oa skoliou kristen. Eno, ar vugale, a vele dirak ho daoulagad imachou hor Zalver, an Itroun Varia, hag ar zent: skoueriou an den er bed-man. Ar Bater a veze lavaret araok ha goude bep pennad skol; ar c'hatekiz desket atao. Eno e veze great kristenien vad; ha meur a grouadur, en eur guitât ar skoliou-man, a iea var ar studi da veza beleg.

Ar zant na ehane da veilla var he skoliou: « Bezit » sonj, emezan d'he vistri kristen, oc'h karget da lakât » karantez Doue e kalonou ho pugale. » Ren a rea he-unan eur vuez kalet ha santel meurbed. Iun a rea bemdez epad ar bloaz, en em skourjeza a rea didruez, bennoz e kouske var an douar pe var eur gador, hag al loden vrasa euz an noz a dremene o pedi.

Rei a reaz ar skouer euz an oll vertuziou; souezuz e oa, dreist oll, gulet he humilite: klask a rea atao ar plas izella, al labour distera. Na c'houlenne nemet eun dra: ober bolontez an Aotrou Doue, ha senti atao ouz mouez an Tad Santel ar Pab.

D'he eiz vloaz ha tri-ugent, er bloaz 1719, Ian-Vadezour ar Zall a rentaz da Zoue he ene bar a veritou. Diskleriet eo bet sant gan ar Pab Leon XIII.

SONJOMP ERVAD :

Na kaer eo da velet eun ti skol leun a vugale, a eneou dinam! Pegen huel n'eo ket karg ar vistri kristen! Labourat a reont, gant skoazel an elez gardian, da viret gras ar vadiziant en eneou-ze, betek ho iaouankiz! Er skol gristen an den a zesk karet Doue, beva en he zoujanz, heuil he c'hour-c'hennou evit gounit an eürusdet eternal. Meulomp ar vugale-ze, ha muioc'h c'hoaz meulomp ho mistri: seulvui a eneou a lakeont var hent ar baradoz, seul gaeroc'h kurunen o dezo digant an Aotrou Doue.

Ha lakât a rit-hu ho pugale er skol gristen? Ha sikour a rit-hu ar skol-ze?

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Ian Nepomuseen, Merzer

(1340-1393)

Ar zant-man, ganet e kear Nepomuk, er Bohem, a oue gwestlet da Zoue a-vianik, gant he dud. Deski mad a reaz en he iaouankiz, ha goude-ze, ez eaz da veleg.

Brudet e oue buan evel eur c'hovesour mad, hag eur prezeger gouizie; ar roue Venseslas hag ar rouanez, he bried, a veze o kovez ganthan. Var aliou he govesour, ar roue, den a skouer fall betek neuze, a renaz eur vuez kristen. Ar rouanez a oa santel dija, met, dindan gouarn he c'hovesour, e teuaz da veza kalz santeloc'h c'hoaz. Goude beza bet fur eur pennad, ar roue a gouezaz adarre en he zizurziou koz, hag a zonje d'ezan e oa ar rouanez ker fall hag hen. Eun devez, ez eaz eta da gaout Ian Nepomuseen, hag e c'hoanteaz klevet gantan ar pec'hejou a govessa he bried; pedi a reaz ar zant d'ho diskleria d'ezan.

Ian Nepomuseen a joumaz mantret, sebezet, o klevet eur seurt goulenn, hag a lavaraz dioc'htu n'ez aje biken eneb he goustians: ar roue na lavaraz grik, met drouk a oa ennan; betek neuze an oll o doa pleget d'ezan, hag ennan he-unan e lavare: « Ar beleg-se a blêgo ive. »

E guirionez, nebeut amzer goude, e reaz lakât Ian Nepomuseen er prizoun, hag e lavaraz: « Dale'het e » viot ebarz, ken o pezo diskuillet pec'hejou ar roua- » nez. » Goulskoude, eun devez, ar zant a velaz eur goard o tigeri dor he brizoun, pedet e oue zoken da vont da leina ouz taol ar roue: hema a gave d'ezan e teuje a benn d'he c'hounit dre gomzou flour, pe dre are'hant zoken, mar bije red. Pedi a reaz anezan brao da ziskleria pec'hejou ar rouanez: « Me a fell d'in, emezan,

» gouzout petra lavar d'eoc'h divar va fenn-me. » Ar zant, sklaset ar goad en he izili gant eur goulén ken digristen, a respountaz dioc'htu adarre n'her graje biken: « Ha pa rofec'h d'in oll vadou an douar evit va » gounit, ne rin birviken ar pezh a c'houlennit; guell e » ve ganen gouzanv kant maro, eget ne deo terri siel ar govesion. »

Ar roue a ieaz e kounnar o klevet ar c'homzou-ze, ober a reaz taoler ar zant er prizoun adarre, hag he vourrevi en eun doare didruez, ken n'en dije lavaret e oa prest da zenti. Bourrevien griz a deuz da ziviska anezan; hen asten a rejont var eur starn koat, hag e lakejont neuze an tan da zevi d'ezan a nebeudou he oll izili. Epad ar boan skrijuz-se, ar zant ne loskaz ket eur glemmaden: he zaoulagad savet etrezek an env, e veze klevet o lavaret, eur vech en amzer, hanoioù Jesus ha Mari. Pa oue guelelet e oa dija dare da vervel, ar vourrevien a ehanaz.

Ar rouanez o veza klevet kement-se, a ieaz d'an daoulin e c'harz treid ar roue da c'houlén truez evit he c'hovesour; tennet e oue neuze diouz he brizoun. Pa-rea a reaz.

Goude beza bevet eur pennad amzer e peoc'h, e velaz ar roue o tont d'he gaout adarre: « Roue oun, emezan, hag evel roue em euz guir da c'houzout peb tra: livirit d'in pec'hejou ar rouanez. — Nan, eme ar c'hovesour, siel ar govesion na c'hell ket beza torret. Eur roue, koulz ha peb den all, a dle plega da Zoue. » Var ar ger-ze, Venseslas a lavaraz d'ar bourreo: « Beuzi a ri Ian Nepomuseen en noz-man. » Ar c'hovesour kalounek a oue eta liamet d'ezan he dreid hag he zaouarn, ha pa deuz an noz, e oue stlapet evel-se divar c'horre eur pount huel, er ster Moldau, er bloaz 1393.

Ar roue a gave d'ezan e vije choumet an torfet-se kuzet, ha ne vije klevet hano ebet ken euz Ian Nepomuseen, met ar c'horf santel a zavaz var c'horre an douar, hag eur sklerijen gaer meurbed a oue guelelet o para varnan. Eun niver braz a dud, souezet o velet ar burzud, a deuz da velet, hag a gavaz korf ar merzer.

Savet e oue ar c'horf santel, eur mor tud a deuz euz a bep leac'h da boket d'he dreid ha d'he zaouarn: sebeliet e oue gant ar brasa henor.

D'ar zeitek a viz ebrel 1719, da lavaret eo, ouspenn 300 vloaz goude he varo, e oue digoret he vez, hag an oll a c'hellaz guelelet he deod choumet ker fresk ha pa vije bet o paouez tremen; meur a zen klanv a oue pa-reet, goude beza en em erbedet ouz ar merzer.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a zo bet merzeriet, abalamour na felle ket d'ezan diskuill ar pec'hejou klevet er gador govez. Pa lenner histor an Iliz, e veler eo bet, e peb bro hag e peb amzer, an oll veleien, prest da c'houzanv ar maro, kentoc'h eget terri siel ar govesion. Na reont nemet ho dever, ha Doue ne vank ket da rei d'ezo ar grasou o deuz ezoum evit-se. Bezit eta fizianz en ho tad kovesour, livirit d'ezan, heb aoun, ar pezh a ra poan d'eoc'h, rak biken ne zigoro he vuzellou evit diskleria an distera ger da eun all.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Paskal Baylon

(1540-1592)

Paskal a zo ganet e rouantelez Aragon, er Spagn, d'ar 17 a viz mae euz ar bloaz 1540. He dad hag he vam a oa labourerien douar, hag a veve divar boan ho divreac'h. Deski a rejont abred he greansou d'ho c'hrouadur, ha lakât a rejont, doum en he galoun, ar garantez a dleomp da gaout e kenver Doue hag ar Verc'hez.

Guelelet a reant e selaoue anezo gant plijadur, hag ec'h en em blije o klevet komz euz an traou santel. Laouen-braz e vefent bet ouz he lakât er skol evit ober he studi, met re baour e oant evit sonjal e kement-se; red e oue d'ezo he gas da di an amezeien da ziouall al loened, evit gounit he vara.

Paskal, dioc'h he du, en doa eur c'hoant braz da veza desket, hag evel na c'helle ket mont d'ar skol, ez ea da gaout ar re a ouie lenn, guech da gaout heman, guech da gaout hennont, evit deski ganto he lizerennou. Nebeut ha nebeut e teuaz evel-se da c'houzout lenn mad. Divar neuze, pa veze gueleit en dro d'he loened, e veze atao eul leor santel benag gantan etre he zouarn, pe avechou c'hoaz he japeled, rak ne joume devez ebet heb lavaret eur rozera, en honor d'ar Ver-c'hez gloriuz Vari.

Goulskoude an drouk-spered a deuaz var he dro da glask he douella, hag ober d'ezan koueza er pec'hed. Ne vele nemet skoueriou fall en dro d'ezan: an dud m'edo o veza ganto, n'oant na fur na modest, divergont e oant en ho c'homzou hag en ho oberou. Paskal, iaouank neuze c'hoaz, a zante tan an ioulou fall o virvi en he galoun, gueleit a rea edo o vont da veza trec'het ha d'en em goll marteze evit atao, ma choumfe pelloc'h e touez an dud-se. Pa veze o lavaret he hedennou, e seblante ive klevet eun dra benag o lavaret d'ezan kuitât ar bed, e leac'h ma kave kement a riskl evit he zilvidigez; hag eun deiz, d'an oad a 19 vloaz, ez eaz da c'houlou beza digemeret en eur gouent euz Urz Sant Fransez, tost da gear Montfort. Eno a teuaz da veza eur skouer vad evit an oll dre an aked a lakea da heuil ar reolen, ha da zenti var ar ger.

P'en deveze echu he labour he-unan, e veze atao prest da rei an dourn evit sikour he Vreudeur, ha ken laouen e veze bepred ma 'z oa eur blijadur beza en he goupagnunez. Abalamour da-ze, he vistri her c'hasaz e meur a gouent all euz ho Urz, evit servichout da skouer d'ar venec'h, ha kalz vad a rea d'ezo e guirionez.

Var fin he vuez, e veze heb ehan eur chapeled gantan en he zourn, hag he vrasa plijadur a oa komz divar benn ar Ver-c'hez, divar-benn he madelez e kenver an dud.

Koueza a reaz klanv d'an oad a zaou vloaz hag hanter kant, ha goude beza tremenet eiz devez var he vele, e rentaz hep poan he ene d'he Grouer, d'ar 17 a viz mae euz ar bloaz 1592.

Ar zant-man a zo bet hanvet gant ar Pab Leon XIII patroun hag alvokad an oll dud devot d'ar Zakramant meulet ra vezo, rak he zevosion vraz, edoug he vuez, a zo bet Sakramant an Aoter: choum a rea meur a heur dioc'htu stouet dirak an tabernakl. Avechou, nerz he garantez a rea d'ezan dibrada divar an douar, ha choum en ear. Goude he varo, Doue a verkaz peger braz e oa respet ar zant evit ar Zakramant. He gorf a oa bet lakeat, dizolo, var ar varv-skaon en iliz, da c'hedal ma vije sebeliet. Hogen, en oferen, da vare gorreou Doue, e veze gueleit daoulagad ar zant o tigeri hag o serri, egiz pa vije bet beo, evit adori Hor Zalver.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, en amzer ma oa c'hoaz krouadur, a lavare he japeled en eur ziuall al loened; c'houi, bugale, a dremen kalz amzer o tiouall ar chatal, kemerit skouer varnan: bezit mad ive da lavaret ho chapeled. Nag a c'hrasou kaer a resevoc'h neuze evit en em ziuall diouz ar pec'hed epad ho puez.

Goude he labour, e oa mall gantan rei an dourn da zikour he vignoned; an dra-ze a zeblant nebeut a dra da lod euz an dud, ha goulskoude, en doare-ze e c'heller gounit kalz meritou evit ar baradoz, ha zoken dont da veza eur zant. Karit eta ho nesa, sikourit anezan en he ezomou, ha Doue a roio d'eoc'h ive he c'hrasou er bed-man, hag he varadoz er bed all.

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Venans, Merzer

Venans a oa ganet en Itali, en amzer genta euz an Iliz. N'en devoa nemet pemzek vloaz pa oue tamallet da veza kristen, ha kerkent ha ma klevaz e oa diskuillet, Venans, heb gortoz an archerien da zont d'he gerc'hat, a ieaz he-unan da gaout gouarner kear, hanvet Antio-

kus. Hen-man a reaz bep seurt promesaou kaer evit touella ar zant, ha bep seurt gourdrizou skrijuz evit he spounta, met guelec a reaz heb dale e kolle he amzer hag he boan gantan.

Antiokus a roaz neuze urz da liamma Venans, d'he staga ouz eur peul, ha d'he skourjeza didruez, met eun eal a zeuaz d'hen diliamma. Ar vourrevien en em lakeaz neuze da zevi he gostou gant goulou var elum, ha da e'houde, o veza he staget adarre, hel lakejont he benn d'an traon a zioe'h an tan. Eur paian, hanvet Anastaz, a oa souezet o velet ar merzer iaouank ker start en he feiz, ha setu hen ha guelec eun eal guisket e guen o kerzet var an tan da ziliamma adarre Venans: Anastaz a gredaz kerkent e Jesus-Christ, hag a oue badezet gant oll dud he di. Hen hag he dud a resevaz, prestik goude, kurunen ar verzerenti.

Venans n'oa ket maro e'hoaz: ar gouarner a glaskaz adarre he zongen da nac'h he Zoue, met koll a reaz he boan. Neuze e reaz he deuler er prizoun, hag e kasaz d'he gaout eur zoudard hanvet Attal evit he douella dre he e'hevier hag he gomzou flour: « Guechall, eme ar » Judas-man, va e'haloum a oa ive goall droet gant ar » relijion gristen, met piou, nemet diskiant e ve, a » e'hell ober fae var madou ha plijadureziou an douar- » man, evit gortoz n'ouzon ket petra er bed all, rak ne » oar den petra zo eno? Red eo beza diskiant evit ober » kement-se; hag em euz troet kein d'ar relijion-ze. »

Venans ne oue ket pell evit guelec e oa Attal mevel an diaoul, deut d'he denti dre he finesaou, ha na falvezaz ket d'ezan he zelaou pelloc'h. Neuze ar gouarner a reaz brevi d'ezan he zent hag he javedou, hag he daoler en eun toul tenvall: eun eal a deuaz adarre d'he denna ac'hano.

Ar merzer a oue kaset da e'houde dirak eur barner all, met heman, o klevet he gomzou, a gouezaz divar he gador en eur iouc'hal: « Doue Venans eo ar guir Doue! » Diskarit hon re-ni! » Mervel a reaz kerkent. Pa glevezaz kement all, ar gouarner a gemennaz taoler Venans d'al loened, met al loened gouez a e'hourvezaz eharz he

dreid evel oaned don, hag euz a douez al loened-se, ar merzer a brezege he feiz d'ar bobl. Red e oue he denna ac'hano, hag he lakât er prizoun.

Antronoz, eur beleg kristen, Porphyr he hano, a deuaz da lavaret da Antiokus: « En noz-man, em euz » guelec Venans o vadezi kalz a dud, hag ar re-man, » kerkent ha ma oant badezet, a deue da veza skedu- » soc'h eget sklerijen an deiz; met e'houi hag ho re, a » joume en denvalijen. » Ar e'homzou-ze a lakeaz Antiokus da egari; kemen a reaz raktal dibenna ar beleg santel. Urz a roaz ive da stleja Venans var an drez hag ar spern beteg an noz: ar merzer a oa hanter varo pa oue ehanet outan.

Dioc'h ar mintin, Venans a oa dirak Antiokus, pare mad adarre. Taolet e oue d'an traon divar gern eur garrrek huel, met n'en devoue drouk ebet o koueza. Da e'houde, e oue stlejet var eun hent goloet a vein ruill, he vourrevien a oa ker skuiz o chacha varnan ma oant dare gant ar zec'hed: ar merzer, dre zin ar groaz, a lakeaz eun eienen da zével evito euz eur roc'h. Roudou pennou he zaoulin a jounaz merket var ar roc'h-se, evel m'her gueler hirio e'hoaz, hag ar mirakl-se a lakeaz meur a baian da gredi e Doue.

Ar gouarner, kounnaret, a roaz neuze urz da zibenna Venans hag an oll gristenien nevez, asamblez gantan. Kerkent ha ma oue nijet ene ar verzerien d'ar baradoz, eur barr arne spountus a zirollaz, hag an douar a grenaz. Antiokus, strafillet oll, a iez da guzat; skoet e oue gant eur maro skrijus abenn eun nebeud deveziou goude (250).

Eun iliz gaer a oue savet evit digemeret relegou ar verzerien.

SONJOMP ERVAD :

Pep hini euz ar poaniou a e'houzanvaz ar zant-man a oa aoualc'h evit ober d'ezan mervel, met an Aotrou Doue a viraz d'ezan he vuez evit ma e'helfe gouzanv muic'h, ha gounit eur gurunen gaeroc'h er baradoz. Ni ive, p'on euz kalz a boaniou er bed-man, a dle ho digemeret a galoun vad, rak ar e'christen ne dle ket beza dishenvel diouz he Zalver.

Jesus a lavar en he Aviel: « Kemerit ho kroaz, ha deuit d'am » heul »; red eo d'eomp eta tremen dre venez Kalvar evit en em gaout gantan en he varadoz. Seulvui or beuz poaniou, seul guelloc'h e c'hellomp paea dle hor pec'hejou, dastum meritou, ha kaerât hor c'hurunen evit an eternite.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Eozen, Alvokad ar beorien

(1253-1303)

Sant Eozen a vez hanvet alvokad ar beorien abalamour d'ar garantez en deuz diskouezet d'ezo: ho zikour a reaz en ho ezommoù hag en ho hench a reaz varzu Doue.

Ar zant-man a oa ganet er bloaz 1253, e maner Kermartin, e kichen Landreger: he dad Helori, aotrou a Germartin, hag he vam Azou, a oa tud santel ha pinvidik. He vam a lavare d'ezan dalc'hmad: « Lakit o poan » da veva fur, evit beza sant eun deiz. »

Eozen a oue skoliet er gear betek he bemzek vloaz; neuze he dud, o velet pegen digor e oa he spered, her c'hasaz da Baris, hag ac'hano da Orleans, da ober he studi gant an doktored gouizieka.

Eozen en devoa moulet komzou he vam en he galoun; tremen a rea he amzer el labour hag er beden, ha p'en deveze eun tammik ehan, e lenne Buez ar Zent gant eun ioul braz da heuil ho skoueriou. Var evez e veze atao, evit miret he ene dinam e kreiz falz plijadureziou ar bed, ha pellât diouz ar goall goumpagnuneziou. Kastiza a rea he gorf dre bep seurt pinijennou: eur gouriz reun a zouge bepred; ne gemeraz biskoaz na kig, na guin, hag en noz e tiskuize var eun dorchon golo, gant eun tammik koat dindan he benn.

O veza achuet he studi, Eozen a zistroaz da Vreiz-Izel, hag a oue beleget d'he zeiz vloaz var 'n ugent; prest goude, arc'heskop Roazon hen hanvaz, abalamour d'he zeskadurez a oa braz dreist, da varner var kement a zell ouz an dud a Iliz. Ar beleg iaouank a lavaraz ia, abalamour he garg a roje tro d'ezan da ober vad.

Guelet e oue neuze peger lem e oa he spered, peger braz e oa he furnez, rak an oll a veule he vadelez. Ar re zoken a veze koundaonet gantan a anzave: « Evit » hor brasa mad eo en deuz douget ar barnar ar zetanzese » hag aliez e rea d'an daou enebour rei an dourn an eil d'egile, evel mignouned guirion. Met eskop Landreger a c'halvaz Eozen davetan: « Em eskopti oc'h » ganet, emezan, ama eta e tleit labourat. »

Ar zant a ziskouezaz beza ken leal ha ker madelezuz e Landreger, evel ma oa bet e Roazon. He galoun a vantage aliez, an daelou a veuze neuze he zaoulagad: « Son- » jal a ran, emezan, e vezin barnet gant Doue d'am » zro, me hag a zo o varn ar re all, brema. » Truez en doa ouz ar beorien: ne oa ket evit gouzanv e vije great an distera gaou outo, ho difen a rea gant nerz, ne gemeraz biskoaz guennek ebet diganto, he oll arc'hant a roe d'ezo, ha pa veze ouz taol, e c'halve ar beorien, evit rei d'ezo ar peb brasa euz he bred.

Furnez ar zant a oa dispar evit dizelei gevier ha finesaou an dud displeal; eun devez dreist oll, e teuz a benn da zifen eun intañvez euz Tours enep troiou kamm daou laer fin.

Hanvet e oue da bersoun e parrez Tredrez, met he garg e Landreger a vire outan da zoursial mad aouale'h euz he barrez, rak-se, var he c'houlenn, e oue hanvet da barrez Louhannek. He barresioniz a oa kritenien dister, met distrei a rejont da Zoue o velet vertuziou ha santelez ho fersoun, hag o selaou he geledadurez. Prezeg a rea meur a vech bemdez: da zeiz Guener ar Groaz, e tiskleriaz ar Basion en iliz Pleubian: distklieriet en doa ar Basion, en devez-se, e c'houec'h parrez all araok.

Ober a rea miraklou heb ehan, evit parea an eneou

hag ar c'horfou: guir eo, ar zant a rea piniennou rust ha kalet; ker boaz e oa da iun, ma choumaz avechou eiz dez hep dibri tam.

Sant Eozen en devoa hanter kant vloaz pa zantaz n'en devoue mui pell da veva. D'an drivac'h a viz mae 1303 a resevaz he zakramanchou diveza, ha divar neuze ne lavaraz ger ebet mui; komz a rea a galoun gant an Aotrou Doue. Antronoz vintin, e rentaz he ene d'he Zalver.

Dizale ar bobl a ziredaz gant doujanz/ha karantez da boket d'he relegou: eun niver braz a dud a gavaz ar pare var he vez. Ar Pab Klemant VI hel lakeaz var an aoteriou er bloaz 1347: tri c'hant test a deuz da ziskleria dirak an dud a Iliz peger santel e oa bet buez sant Eozen. Hanyet eo bet, er bloaz 1924, gant an Tad santel ar Pab Pie XI, eil patroun Breiziz. Hor patrounez kenta, e baradoz an Aotrou Doue, a zo an Itroun santez Anna: mam goz Hor Zalver, hag hor mam d'eomp-ni.

SONJOMP ERVAD :

Sant Eozen a zo bet ganet hag en deuz bevet e Breiz-Izel. Kalz a dud euz hor bro o deuz ar zant-man da baeroun, met na rouez int, siouaz! ar re a gemer skouer dioutan! Hen a gare ar beorien, ar vinored: poania a rea d'ho difen, ha d'ho zikour. Pebez kentel evit meur a zen digaloun, re zouget d'an arc'hant! Int-hi n'o deuz ket an distera nec'hamant evit kemeret peadra an intanvezed hag ar vinored, evit ober gaou outo, ha pa vefent zoken kerent d'ezo! Laerez a zo atao pe-c'hed, met kemeret madou minored a zo eul laeronsi euz ar re bounera. Mar fell d'eomp kaout ar zent da batrouned, da alvokadet dirak Doue, poaniomp da veritout ho skoazel, o kemeret skouer diouto.



AN UGENTVED DEVEZ A VIZ MAE

Sant Bernardin a Zienn

(1380-1444)

Ar zant-man a zo ganet tost da gear Sienn en Itali, d'an 8 a viz guengolo, er bloaz 1380. He dud o doa eur renk huel. D'he dri bloaz e kollaz he vam, ha d'he zeiz he dad: eur voereb hanvet Diana eo a gemeraz soursi anezan. Bernardin a gemere he blijadur a vianik o respount an oferen, o selaou ar zarmoniou: ober a rea en dro, d'ar vugale all, ar prezegennou en deze klevet en iliz. Eun deiz, Diana, o velet ne oa nemet eun dorzik vara evit lein tud an ti, a lezaz eur paour keaz da vont kuit heb tam; Bernardin a oue mantret: « En han' » Doue emezan, roomp eun dra benag d'ar paour-ze; » anez, na c'hellin debri netra hirio. »

D'he unnek vloaz, e oue kaset d'ar skol gant mistri gouizieg, deski a reaz buan, met he volesti hag he burete a oa treac'h d'he zeskadurez. Ruzia a rea pa gleve an distera tra mezuz, hag he gamaraded skol a lavare p'her guelent o tostât: « Peoc'h, peoc'h, ema erru Bernardin. » Eun deiz, eun den euz kear a gomzaz d'ezan a draou divalo; kerkent ar zant a c'halvaz he gamaradet, hag e redjont gant ar vein varlere'h an den-ze. Pedit a rea dreist oll ar Verc'hez Vari; he Vestrez vad a rea anezi: iun a rea bep sadorn en he henor.

O veza achuet he studi, ez eaz e Breuriez an Itroun Varia en hospital Sienn, evit soursial ouz ar re glanv.

Er bloaz 1400, e tirollaz ar vosen er vro; mervel a reaz eun niver braz a dud, en hospital hebken e varve betek ugent bemdez, hag an darn vuia euz an dud a veze var dro ar re glanv, a oue sammet gant ar c'hlenved spountuz-se. Bernardin a veze noz deiz e penn guleou an dud keiz, oc'h entent outo, o kennerza ho

c'halonou, o sikour anezo da ober eur maro mad. Hen a zebelie ar re varo. Pa 'z eaz ar vosen kuit, ar zant a gouezaz klanv d'he dro, hag a joumaz var he vele epad pevar miz. Pa oue pare, ez eaz en Urz Sant Fransez: edo neuze o ren he dri bloaz var 'n ugent. Eaz e kavaz heuill piniennou an Urz-se, rak, hed ar vech en doa kastizet he gorf dre ar iun hag ar binijen.

Kaset a oue da brezeg d'ar c'heariou braz euz an Itali. He vouez a oa goloet, met var he beden, an Itroun Varia a roaz d'ezan eur vouez skiltr ha krenv. Biskoaz ne oa bet klevet eun den o prezeg gant muioc'h a ners-kaloun: lakât a rea ar bec'herien da zistrei da Zoue, hag ar gristenien laosk da veza santel.

He zevosion vras a oue hano santel Jesus: an hano santel-ze a veze bepred var he vuzellou, ha great en doa skriva anezan gant lizerennou aour var eun daolennik; a greiz prezeg e tiskoueze an hano santel d'ar bobl: « Hano Jesus, emezan, a ro nerz d'am fedennou, » d'am frezegennou. »

Doue a roaz d'ezan an donezon a viraklou; ha doujanz an oll evit ar zant a deuz da greski c'hoaz. An Tad Santel ar Pab a ginnigaz d'ezan tri eskopti, met Bernardin ne falvezaz ket d'ezan beza eskop. E kreiz he labourou e kavaz c'hoaz amzer da skriva levriou a zevosion, evit maga santelez ar gristenien. Er bloaz 1444, dere'hent gouel ar Iaou-Bask, ar zant a resevaz he zakramanchou diveza. R'en a rea neuze he bevar bloaz ha tri-ugent. Renta a reaz he ene da Zoue en eur lavaret hanoiou santel « Jesus ha Mari ». Lakeat eo bet var roll ar zent gant ar Pab Nikolas V.

KENTELIOU BERNARDIN A ZIENN

I. — Dre an dousder hag ar basianted an den a zo mestr varnan he-unan, hag a zeu a-benn da c'hounit ar re all.

II. — Doue n'en deuz biskoaz great skouarn vouzar da beden eur galoun humbl ha glac'haret.

III. — Ar beden a zav betek tron Doue; ma kendalc'homp da c'houlen digantan, ni or bezo ar grasou or beuz ezom anezo.

IV. — Doue a c'hourc'hemen d'eomp he garet evel eun Tad leun a vadelez hag a drugarez.

SONJOMP ERVAD :

An distera komz mezus a rea d'ar zant-man ruzia. Pa zigouez da unan benag lavaret dirazoc'h ar seurt komzouze, ruziit ha tavit evit merka d'an den divezet-se e tisplij d'eoc'h he gaoziou. Mar o peuz galloud varnan, grit dezhan tevel. Ho tever a zo kalz strisoc'h ma 'z euz bugale var al leac'h. Penaoz e c'hell eur c'hristen lavaret komzou divalo? Diskouez a ra dreizo peger brein ha donjeruz eo he galoun. Pellaomp, pa c'hellomp, diouz an dud a lavar ar seurt komzouze, gant aon na deufent da sklabeza hon ene.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Sant Per Selestin (1215-1296)

Ar zant-man a oa ganet en Itali. He dad hag he vam n'o doa ket a zanvez, met doujanz Doue a oa en ho c'halonou: daouzek mab o devoue, ha Per a oue an unnekved anezho.

Eun devez ma oa ar vam o komz gant he bugale, e lavaraz: « Daoust hag euz ken aliez a vugel am euz, ne » zeuio nikun da veza eur zervicher braz da Zoue? » — « Fvidon-me, eme Ber kerKent, na c'houlennan di- » gantan nemet eun dra: heuill mad he volonteze san- » tel. » Ar gomz-se a lakeaz kaloun ar vam da dridal gant ar joa, hag heb dale e kasaz he mab d'ar skol. Red e oue d'ezhi labourat noz-deiz evit gellout paea ar mizou, met Per a boanie kement da zeski ar skianchou ha da heuil hent ar zantelez, ma oa foug enni o klevet ober menleudi he mab.

Pa oue achu he studi gantan, d'he zeitek vloaz, Per a droaz kein d'ar bed, evit tec'het en eul leac'h distro, dindan kleuzen eur garrek, da ren eur vuez a beden hag a binijen. Epad pemp bloaz e iunaz bemdez,

e kouskaz var an douar noaz hanv e'hoanv, eur zae reum hebken gantan. Daoust d'ezan da gastiza he gorf, an drouk-spered n'hen lezaz ket e peoc'h, he denti a reaz heb ehana, met an elez a deue da rei kaloun d'ar zant e kreiz he enkreiz. Eun devez eun den a lavaraz d'ezan: « Ma vijac'h beleg, o piñe muioc'h a e'halloud enep an » diaoul, rak bemdez e tiskene Doue en ho kaloun, da » rei d'eoc'h muioc'h a nerz da stourm. »

Per a heuliaz ali an den santel-ze, hag a ieaz da Roum da reseo an Ursiou sakr; da e'houde, ez eaz var menez Moron da ober pinijen adarre.

Er bloaz 1251, Per a ieaz d'ober he ermitach var eur menez all: daou ziskibl hebken a oa gantan, met he zantelez a oa ken brudet dija, ma velaz eun niver braz a dud o tont da e'houlen digantan ho bleina var hent ar zilvidigez. Red e oue d'ezan sevel eur gouent evit ho digemeret; int-hi a oue ar venec'h kenta euz eun Urz nevez, hanvet divezatoc'h an Tadou Selestined. Araok he varo, Per en devoue e'houec'h kant manac'h dindann.

Per Selestin n'en doa ken ioul nemet da veva en he gouent, met da varo ar Pab Nicolas IV, ar manac'h santel a oue hanvet da zere'hel he blas. Ar zant a reaz he zont da dec'het kuit evit mont da guzat, met bolontez Doue a oa re anat, hag e rankaz plega. Great e oue eskop, ha goudeze ec'h azezaz var gador sant Per dindann an hano a Ber Selestin.

Doue eo en doa lakeat sevel Per Selestin da bap, evit rei da anaout pegen humbl e oa. Labour eur pab a zo atao pounner; ouspenn-ze, an Iliz a oa neuze diez da e'houarn, hag ar zant ne gave ket en devije amzer aoualc'h evit pedi ha sonjal e Doue; aoun en doa, gant an dra-ze, ne raje ket mad aoualc'h he zever. Tri miz eta goude ma oa bet hanvet da bap, e roaz an dilez euz he garg, evit distrei d'he gouent.

Ar pab nevez, Bonifas VIII, a roaz d'ezan eur e'has-tel e kichen Napl; beva a reaz eno evel eun ermit. Lavaret a rea laouen: « N'em euz biskoaz goulennet netra » nemet eun toul kuz, breman em euz bet va goulenn:

» meulet ra vezo Doue! » Eno e vevaz ar seitek miz diveza euz he vuez, o pinvidikât he gurunen er baradoz: mervel a reaz er bloaz 1296, pa oa en he vloaz ha pevar-ugent.

Seitek vloaz goude he varo, ar pab Klemant V a lakeaz Per Selestin var roll ar zent.

KENTELIOU SANT PER SELESTIN, PAB :

I. — Ar galoun a zo e peoc'h gant an Aotrou Doue, e deuz enni guelloc'h tenzor eget oll kurunennou ar bed-man.

II. — Ar poaniou a e'houzanver er bed-man ne dint netra e kichen joaiou ar baradoz.

III. — Er baradoz hebken ema hon eüruset, penaoz e e'hell eta an den en em blijout er bed-man?

IV. — Eun devez tremenet er peoc'h, o sonjal e Doue, a dal muioc'h eget mil bloaz tremenet e maneriou ar brinsed.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a gave guelloc'h beva evel ermit eget dont da veza Pab. Rei a reaz an dilez euz ar garg-se, an huella a zo var an douar, evit en em denna pell diouz an dud, ha ren eur vuez kuzet. An elez hag an dud a joum souezet o velet eur skouer a humilite ker kaer. Na pebez kentel evit tud ar bed: atao emaint o klask en em zavel dreist ar re all, atao e klaskont henoriou ar bed-man: henoriou ha ne dint goulskoude nemet moged hag avel. Eun dra hebken en deuz an den da ober er bed-man: karet Doue ha miret he lezen.



AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Sant Herbot, Ermit

Ar zant-man, var a leverer, a zo ganet e Bro-Zaoz: he dud, choumet dizher epad kalz bloaveziou, hen resevaz gant levenez. « Mil bennoz d'an Aotrou Doue, eme » zo, en deuz great varnoup eur zell a druez, ha se- » laouet hor pedemou. »

Herbot, savet e doujans hag e karantez Doue gant eun tad hag eur vam gristen, a reaz pinijen a vianik; ne 'z » a nemeur gant ar baotred all euz he oad, guelloc'h e kave beza he-unan evit pedi. Eun devez m'oa eat en eur c'hoat evit sonjal e Doue, easoc'h a-ze, pell diouz an dud, e kavaz eun ermit koz hag a roaz d'ezan aliou leun a furnez: « Arabad eo d'eoec'h, emezan, tremen ho » puez daou-hanter etre Doue hag ar bed, bezit oll da » Zoue. »

Prest goude, an den iaouank a ziskleriaz d'he dud ar c'hoant en doa da vont da veva en eun ermitach. « Ma » chouman er bed, emezan, emañ e riskl d'en em » goll: va list d'en em rei oll da Zoue. » He dud, gla- c'haret oll, o roaz evelato ho asant: aon o doa da vont eneb bolontez an Aotrou Doue.

Ar zant a lavaraz d'ezo: « Kenavezo er baradoz », hag evit pellat muioc'h diouz he anaoudegez, e savaz en eur vag, e treuzaz ar mor, hag e touaraz e Breiz-Izel, var zouar Leon. Eno e choumaz eur pennad demdost d'an aod, met an dud a zeuaz d'he velet, hag hen, leun a druez ouz ar re glanv, a bareaz meur a hini anezo.

An dud a deuas neuze muioc'h mui da glask ar pare, hag ar zant, gant aon da veza re zistranset divar he be- dennou, ha da veza kollet gant an ourgouill, a dec'haz dounoc'h en douar braz. En dro-man, an dud a oue di-

e'hraz ha kriz evitan: en eun ti e oue great d'ar chas mont varlere'h ar zant. Ar beachour en doa bet digant Doue galloud d'ober miraklou, met na implijaz biskoaz ar galloud-se nemet evit ober vad; e leac'h taoler he valloz var an dud digermes-se, e plegaz he benn, hag ez eaz larkoc'h.

Eno, evit plijout muioc'h mui da Zoue, e renaz eur vuez rust, e reaz pinijen evitan he-unan hag evit ar re all: Doue, evit merka d'ezan he garantez, a reaz d'al loened gouez senti outan. Choum a reaz pell el leac'h-se, var ribl ar ster Elez a ziskan varzu an draonien en eur drouzjal spountuz gant he daranou, hag an dud a zeskaz nebeut ha nebeut hent an ermitach: eno eo emañ chapel sant Herbot, e parrez Plounevez ar Faou.

Ar zant, madelezuz atao, a roe aliez ar pare d'ar re glanv, a gentelie an oll dre he aliou hag he skoueriou leun a furnez: dastum a rea meritou braz evit an env, epad ma poeze dourn Doue var ar re o doa great goall- vuez d'ezan eun devez: koueza a rejont en dienez.

Erfin, dinerzet gant he binijennou braz, ar zant a gouezaz klanv: eur manac'h euz a gichen a deuz da rei d'ezan he zakramanchou diveza, hag e tremenaz en eur lavaret ar c'homzou-man: « Etre ho taouarn, va » Doue, me a laka va ene. »

Sant Herbot a zo unan euz ar zent a zo muia hano anezo en hor bro: gallouduz eo er baradoz; var he vez, a veler c'hoaz hirio er penn pella euz parrez Plonevez, ez euz savet er bloaz 1498, eur japel gaer hag a vel kalz pardounerien bep bloaz.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, goude beza great ar vad, hervez he c'hall- loud, a oue dispriet ha goall gaset gant tud kris. Soubla a reaz da volontez Doue, ha setu penaoz e tleomp ober, ni ive. Meur a vech e vezimp tamallet e gaou, meur a vech e vezo rentet d'eomp an drouk, evit ar mad hor bezo great. Leve- romp neuze da Zoue: « Va Jesus, plijet ganeoc'h reseo ar » boan, an dismegans-se a c'houzanvan, e pinijen evit ar » pec'hejou am euz great. » En doare-ze, ho poaniou a vezo eur vad evidoc'h, hag ho kurunen a vezo kaer er baradoz.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Sant Donasian ha Sant Rogasian

(288)

Sant Klair, var a lavar an dud desketa, eo en deuz digaset ar c'henta, sklerijen ar feiz e Breiz-Izel. Sant Lin, ar Pab kenta goude sant Per, a zakraz sant Klair eskop, hag a roaz d'ezan, evit he gennerza, unan euz an tachou o doa staget an Abostol braz ouz ar groaz. Kemen a reaz d'ezhan mont da brezeg an Aviel e Breiz-Izel, hanvet neuze Armorik.

Klair a joumaz en Naoned, met Adeodat, he avieler, a brezegaz e bro Guened hag e Kerne, epad ma teue eur missioner all, dre vor, da brezeg e Mountroulez ha trovar-dro. Sant Klair a zeuaz neuze en hor bro, varlerc'h he avieler, da startât ar gristenien nevez er feiz, hag a varvaz en eskopti Guened, er bloaz 96.

D'ar mare-ze, ar skrivanerien a oa rouez, setu na ouzer ket nemeur a dra divar benn hon tud koz da c'houde; kenta merzerien a zo hano anezo en hor bro, a zo Donasian ha Rogasian, o deuz gounezet ho c'hurunen en Naoned, d'ar 24 a viz mae 288.

Pa zougaz Diokletian ha Maximian eul lezen a varo eneb ar gristenien, Donasian, den iaouank a renk uhel, a oue diskuillet. Tamallet e oa da veza troet kein d'an idolou, ha da veza great d'he vreur kosa Rogasian heuil he gredennou: Donasian a oa bet badezet, Rogasian ne oa ket.

Pa oue kaset Donasian dirak ar barner, hema her gourdrouzaz: « Ma n'eo ket eur vez, emezan, evit eun » den iaouank euz ho renk, nac'h ar respet dleet d'an » doueou braz Jupiter hag Apollon! E plas doueou » Roum, ac'h adorit eun torfetour staget ouz ar groaz

» dre urz Pons-Pilat, hag o peuz c'hoant ober d'an oll » he adori ive. » Ar merzer iaouank a respountaz heb aon: « Guir eo, c'hoant em euz da yelet an oll oc'h » adori Jesus, rak Hen eo a ro ar vuez. » Drouk ennan, ar barner a reaz taoler Donasian er prizoun.

Rogasian a oue neuze digaset dirazan, hag ar barner a glaskaz he douella gant komzou flour ho promesaou kaer. « N'oc'h ket badezet c'hoaz, eme ar barner, bezit » furoc'h eget ho preur, ha distroit d'hon doueou. — » Hag henori a c'hellit-hu ho toueou? a respountaz Rogasian. Evidon-me n'her grin ket, rak guasoc'h int » bet en ho buez, eget an dud a skouer fall. » Koumna-ret oll, ar barner a reaz he chadenna gant he vreur.

Iaouen e oa an den iaouank abalamour m'en doa respountet heb aon, met sonjal a rea en he galoun: « Siouaz! n'oun ket badezet. » Er prizoun, an daou vreur en em vriataz gant karantez, ha Donasian a lavaraz: « Da c'hoaz, breur, a zervicho d'id da vadiziant, » bez dinec'h. » An daou zen iaouank a dremenaz an noz oll o pedi, hag o kana meuleudi da Zoue.

Antronoz e ouent kaset assemblez dirak ar barner, hen a lavaraz d'ezo: « Goasoc'h oc'h eget an dud dizek, rak » anaout a rit hon doueou, hag en despét da-ze, e rit » fae varno. » An daou vreur a respountaz: « C'houi » eo a zo dallet gant ho teskadurez, pa adorit doueou » koat pe arc'hant; ni ne adoromp nemet ar guir Doue, » an Hini a roio d'comp eur vuez eüruz en he varadoz, » abalamour m'on dezo skuillet hor goad evitan. N'on » deus aon ebet rak an oll dourmanchou a rafac'h » d'comp divoaska, Doue hor c'hemmerzo. » Ar barner, eat en egar, a reas da genta ho bourrevi, ha d'an eil ho dibenna.

Ar vourrevien a oue kriz spountuz; an daou vreur a oue divisket, staget var eur mare'h koat, ha chachet var ho oll izili ken a strakent: skourjezet e ouent ive, ken a ouent leun-c'hoaz. Etretant, an daou verzer kalounek en em gennerze an eil egile, hag a bede Doue e guelel ho c'halou: ar vourrevien eo a skuizaz da genta.

Ho c'horfou a oue diliammet, guisket e ouent, ha kaset

er meaz euz kear: eno e ouent treuzet gant eun taol lans, ha dibennet da c'houde, er bloaz 288, var a greder.

Tud an Naoned a zo devot bras d'an daou Verzer.

SONJOMP ERVAD :

Pebez nerz kaloun a reseo eur c'hristen! Setu aze daou zen iaouank, savet en eun ti pinvidig, o doa er gear an oll eazamanchou a gavet en amzer-ze, hag a zo treac'h d'ar banner ha d'ar vourrevien didruez. N'oump ket souezet e rofe Doue kement a galoun d'ar re her c'har, met leac'h on deuz da veza souezet p'en em velomp ken digaloun, ni, goude m'on deuz resevet kement a c'hrasou digant an Aotrou Doue!

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Ar Verc'hez Vari, Sikour ar Gristenien

Ar Vetalen burzuduz

Pa oa ar gristenien varnez koll gant an Turked di-vadez, sant Pi V a vodaz oll zoudardet ar Spagn hag an Itali var listri brezel, hag a zistrujaz listri an enebourien dirak Lepant, d'ar 7 a viz here 1571. Ar zoudardet, ar vantolodet o doa stourmet; kenvreudeur Breuriez ar Rozera o doa pedet, gant an oll gristenien; ha Doue en doa roet eur gounid kaer d'he zervicherien. Evit delc'her sonj euz ar gounid-se, sant Pi V a reaz erbedi ar Verc'hez benniget dindan eun hano muioc'h, el Litanio: ober a reaz lavaret: **Auxilium christianorum, ora pro nobis**: sikour ar gristenien, pedit evidomp.

Er bloaz 1809, Pi VII, laeret he vadou digantan, ha prizouniet e Fontainebleau gant an Napoleon koz, en em erbedaz a galoun ouz ar Verc'hez benniget. Gant an amzer, he beden a oue selaouet, hag er bloaz 1814, e c'hellaz distrei da Roum: he vadou a oue restaolet d'ezan.

Evit merka he anaoudegez vad d'an Itron Varia, e savaz eur gouel evit he henori d'ar 24 a viz mae, dindan an hano a **zikour ar gristenien**.

Mar o deuz ar gristenien, dre ar bed oll, leac'h da henori an Itron Varia, ar Fransizien o deuz muioc'h a leac'h c'hoaz eget ar re all, o veza m'eo en em ziskouezet ken aliez en ho bro, evit ho sklerijenna: er Zalett, e Lourd, e Pontmain. An oll a anavez, kalz pe nebeut, histor ar pelerinachou brudet-se, setu perak, evit kreski devosion ar Vretoned d'ar Verc'hez, e vezo hano er gentel-man, euz ar Vetalen burzuduz a vez gulet stank, meur a ugent vloaz so.

Er bloaz 1830, e velet e Paris, o c'houlenn beza resevet etouez leanezed sant Visant a Baol, eur plac'h iaouank, hanvet Katharin Laboure. Eun nozvez, da unnek heur hanter, eur c'hrouadur, kaer evel an deiz, a zihunaz anezi: « Deuit, emezan, deuit d'ar japel, ar Verc'hez a » zo var c'hed ac'hanoc'h. »

Nec'het da genta, al leanez iaouank a zentaz evelato: kaout a reaz ar japel sklerijennet oll, hag ar Verc'hez Vari er penn huella, guisket e guen gant eur voel c'hlaz. Katharin a zaoulinaz dirak an Itron Varia, a lakeaz he daouarn kroaziet var daoulin ar Verc'hez benniget, hag a joumaz evelse ouspenn eun heur, da zelaou kente-liou he Mam vad. Ar Verc'hez a lavaraz d'ez: « P'o pezo poan galon, deuit da bedi Jesus ama en tabernakl; na neuze, na guzit biken netra ouz ho kovesour. »

Pa oue eat an Itron Varia kuit, ar paotrik a henchaz Katharin en dro, betek he c'hampr. « Val eal mad eo » e tlie beza, eme Gatharin, divezatoc'h, pa gomze anez-» han. »

Al leanez ne ouie ket petra c'houlenne an Aotrou Doue diganti, met d'ar 27 a viz du euz ar memez bloaz (1830), e velaz, da bemp heur hanter euz ar pardaez, pa oa an oll leanezed o pedi, ar Verc'hez Vari dirak unan euz aoteriou ar japel. « Choum a rea, eme Gatharin, en » he zav var boul ar bed, guisket e oa gant eur zae ven » hag eur vantel c'hlaz; euz he daouarn digor e strinke » bannou sklerijen, hag a rea d'ar bed lintra dindan » he zreid. »

Hag e sonje d'al leanez klevet eur vouez o lavaret:
« Ar bannou sklerijen a verk ar grasou a skuillan var
» ar bed, met stankoc'h int var eul loden euz ar bed,
» hag a zo bro Frans. » En dro d'ar Verc'hez, e vele
skrivet e lizerennou aour: « **O Mari, konsevet dinam,**
» **pedit evidomp-ni en em erbed ouzoc'h.** »

Da e'houde, al leanez na velaz mui ar Verc'hez, met
gulet a reaz eun M gant kalonou sakr Jesus ha Mari,
hag ar vouez a lavare: « Red eo d'eoec'h ober moulla eur
» vetalen var ar patrom-ze. »

Katharin Laboure a zentaz: poan e devoue, da genta,
o rei da gredi e doa gulet e guirionez an Itroun Varia,
met ar Vetalen a oue penn-kaoz da gement a bec'he-
rien da jench buez, ma oue anavezet, e berr amzer, dre
bevar e'horn ar bed. Hag ar Verc'hez benniget na
baouez da ober burzudou heb ehan, ha burzudou euz
ar re gaera, evit ar re a zoug gant devosion ar Vetalen-
ze. Dont a ra da vir bemdez komzou an doktor euz an
Iliz, sant Hiler: « Ar pec'her, n'euz fors peger braz e
ve he dorfejou, a vezo saveteat, m'en deuz fizians er
Verc'hez. »

SONJOMP ERVAD :

Na peger mad eo an Itroun Varia! Na baouez ket da gaout
sonj ac'hanomp hed hor buez. Bezomp mad, ni ive, da zou-
gen atao varnomp ar chapeled, ar skapular, ha Metalen ar
Verc'hez; en doare-ze e verkimp oump e guirionez he bu-
gale.



AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

SANT GREGOR VII, PAB (1013-1085)

Ar zant-man en deuz henoret an Iliz dre he skiant,
he vertuziou hag he zantelez. Ginidik e oa euz an Itali
(1013), hag he hano kenta a oa Hildebrand.

Kaset e oue d'ar skol da Roum, hag eno en devoue
poan galoun pa anavezaz pegen goall-gaset e oa neuze
an dud a Iliz, hag o velet ar vuez fall hag an dizursiou
a rene etouez ar gristenien. Kemeret a reaz sae ar
venec'h e kouent Kluni, eno e oa striz an urz. Hilde-
brand a heuillaz ar reolen gant kement a aked, ma teuaz
an oll venec'h d'he henvel tad abad. Met Doue a felle
d'ezan he zével hueloc'h evit savetei, dreizan, muioc'h
a eneou, ha dizale. Hildebrand a oue hanvet tad abad
e kouent Sant-Paol, e kichen Roum; prestik goude, ar
Pab Leon IX her greaz kardinal, hag hel lakeaz da
ziluia a veze roet d'ezan.

He labour ne oue ket eaz: ar e'hudennou diesa da
zirouestla a veze roet d'ezhan.

Ar pabed all: Viktor II, Stephan IX, Nikolas II,
Alexandr II hen dale'haz ive da dosta d'ezo. Pa deuz
ar Pab Alexandr II da vervel, er bloaz 1073, an oll a
zavas ho mouez da lavaret e oa red lakât Hildebrand
en he blas. En despet d'he humilite ha d'he zaelou, ar
zant a rankaz plega da volonteaz Doue, hag azeza var
gador sant Per: kemeret a reaz an hano a C'hregor VII.
Ar Pab-man a zo skeduz evel an heol, etouez ar pabed:
komz ha labourat a reaz kement evit lakât an urz vad
dre an Iliz, evit skigna ar feiz muioc'h mui, evit ma
vije libr an eskibien, evit stourm ouz ar gaou hag ouz
ar brinsed fall, ma ne gavomp ket eur Pab, azalek

amzer an ebistel, hag en defe labouret muioc'h, na gouzanvet kement hag hen evit difen guiriou an Iliz santel.

Stad an Iliz santel, d'ar mare-ze, a oa mantruz da velet: ar brinsed hag an dud chentil vraz eo a zibabe an eskibien, ar bersoued, ar superioed da lakât e penn an eskoptiou, ar parreziou, ar c'houenchou. E leac'h dibaba an dud desketa ha santela, ar brinsed a zave er c'hargou, aliez, ho c'herent tosta, pe c'hoaz, tud hag a roe arc'hant d'ezho, heb sellet pe hi a oa tud santel pe ne oant ket. Ar Pab Gregor VII a stagaz, kerkent, d'al labour, evit terri ar bozamanchoù fall-ze, hag eina pep tra. Tenna a reaz ho c'harg digant an eskibien hag ar veleien, ar superioed o devoa he frenet, ha digant ar re a rene eur vuez direol, pe a oa re laosk e kenver dizursiou an dud a renk huel. Difen a reaz, startoc'h eget araok, rei ha prena henoriou ha grasou an Iliz evit arc'hant.

Impalaer an Allemagn, hanvet Herri IV, a reaz kement a oa en he c'halloud, evit enebi ouz ar Pab santel, met Gregor a daolaz an ekmunugen varnan. Dre eno, e tifenne ouz ar veleien rei he zakramanchoù d'ezan, hag e rea d'he zujidi chom heb senti outan.

Eun devez m'edo ar Pab kalounek-man oc'h oferenna, e oue guelet eur goulm, o tisken euz an env, o chom var he skoaz deou, hag o plava var he benn: kement-se a verke edo ar Spered-Santel o sklerijenna ar pab evit he zikour da ren an Iliz.

Pa velaz impalaer an Allemagn ne zente mui ar gristenien outhan, ez eaz da Ganossa da zaoulina dirag ar Pab, da ober d'ezhan promesaou kaer. Gregor, neuze, a resevaz anezhan, adarre, e renk ar brinsed kristen.

Kerkent ha ma oue distro en he vro, Herri a zavaz eun arme vraz, a zaillaz var an Itali, hag a reaz ar muia ma c'hellaz a zrouk d'he vadoberour, o kemeret kear Roum dre nerz. An Normand Guiskar, roue var eun dachen euz an Itali, a ziredaz da zikour ar Pab: kas a reaz anezhan, e savete, da Venez Kassin da genta, da Zalern da c'houde. Eno, ar Pab santel, rannet he ga-

loun, a varvaz er bloaz 1085, en eur lavaret: « Karet » em euz ar justiz, kaseat em euz ar fallagriez; abalamour da-ze e varvan en harlu. »

Doue a ziskleriaz he zantelez, araok ha goude he varo, dre eun niver braz a viraklou.

SONJOMP ERVAD :

Burzuduz eo guelet eun den o kaout kement a nerz kaloun evel ar zant-man. Derc'hel a reaz penn d'ar brinsed, d'an dud chentil, d'an impalaer, da gement hini a vrese guiriou an Iliz pe a lakea dizurz enni. Var zav e veze atao dirak an dud fallakr, chom a rea dispount dirazo, en despet d'ho galloud; rankout a reaz gouvanv bep seurt poaniou, betek zoken tec'het kuit dirak he enebourien, ha mont, pell diouz Roum, en harlu da vervel. Met gouzanv poaniou evit an Iliz a zo gounit ar baradoz.

Kemeromp skouer varnan, komzomp ha bevomp hervez Doue: poan or bezo a berz an dud, marteze, met Doue hor paeo en he rouantelez.

AR C'HOUECHVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

SANT PHILIPP NERI

(1515-1595)

Philipp a oa ganet e Florans, en Itali, er bloaz 1515, euz a dud a zoujans Doue. Iaouank e oa c'hoaz pa gol-laz he vam; he dad o veza dimezet evit an eil guech, Philipp a oue leun a respet hag a garantez evit he lez-vam. D'he drivac'h vloaz ez eaz daved he eontr, marc'hadour pinvidik braz; hen-man a gare kement he niz, ma klaskaz sina d'ezan he oll zavvez, met Philipp a reaz fae var an danvez, hag a iezaz da Roum da achui he studi. Dont a reaz, abarz pell amzer, da veza brudet evit he vouisiegez koulz hag evit he zantelez. Iun a rea bem-

dez, hag aliez e choume tri devez heb tam; he vuez a oa sonjal e Doue; bemdez ez ea da bedi er seiz iliz veur euz a Roum, ha meur a vech e tremene an noz e guered Kallist var bez ar verzerien.

D'he dri bloaz var 'n ugent e tilezaz peb tra evit en em rei d'an oberou a drugarez. D'he c'houec'h vloaz ha tregont, evit senti ouz he govesour, e resevaz an Ursiou Sakr, ha neuze e poaniaz da veza santeloc'h c'hoaz: tremen a rea eul lodenn vad euz an noz o pedi. Da c'houlou-deiz e lavare an oferen; epad an amzer-ze, he vizach a veze entanet, an daelou a rede euz he zaoulagad, karantez an Aotrou Doue a rea d'he galoun lammant gant kement a nerz ma torraz diou euz he gostou. Guelet e veze meur a vech o choum e kreiz an oferen heb flach; dibradet divar an douar, hag eur sklerijen gaer o para en dro d'ezan. Lavaret a rea aliez da Zoue: « Aoualc'h, » Aotrou Doue, aoualc'h a c'hrasou a roit d'in, na chel- » lan mui herzel ouz va levenez! »

Dioc'htu goude an oferen, ez ea er gador govez, ha choum a rea eno avechou betek an noz. Diez e vefe lavaret an niver a dud a goveseaz epad he vuez, hag a zistroaz gant he zikour, da Zoue. Anaout a rea dre vurzud, ar c'houstiansou pur, dre ar c'houez vad a zante ganto, hag ar bec'herien dre ar c'houez fall. O velet pegen niveruz e oa an dud a deue bemdez da c'houlou digantan sklerijen var ho buez, ar zant ho digemere en he gampr; en orator-ze e rea d'ezo prezegennou, e roe d'ezo ar zakramanchou, hag e rea d'ezo pedi gantan. Niver an dud-se a greskaz kement, ma rankaz Philipp gervel beleien all d'he zikour: sevel a reaz ganto eun Urz nevez, hanvet Kongregasion an Orator.

An oll labourou-ze ne rejont ket d'ar zant dilezel ar beorien. O veza great eur vech an aluzen d'eur c'hlas-ker bara, e velaz e oa eun eal en devoa kemeret furn ar paourkeaz. Sevel a reaz eun hospital evit digemeret an dud paour a zeue da Roum da bardouna.

Doue a roaz d'he zervicher an donezoun a viraklou; para a reaz tud klanv a bep seurt, tud kam, tud toc'hor; renta a reaz zoken ar vuez d'eun den maro. Eun devez,

e Roum, eur paotr pevarzek vloaz, eat toc'hor en eun taol, a c'houlennaz an Tad Philipp, met ar zant a oa gant an oferen. Kerkent ha ma oue achu gantan, e teuaz da velet an hini klanv: **maro e oa**, edot oc'h he liena. Philipp en em strink neuze d'an daoulin en eur bedi Doue, ha kerkent, an hini maro a zav en he goazez: « Pehini ar guella ganez, eme ar zant, pe choum beo, pe » distrei d'ar bed all? » — « Oh, emezan, guelet em euz » dor ar baradoz digor: eno ema Doue. Va mam ha va » c'hoar a zo eno ive, goulou a ran mervel » ha kerkent e tremenaz etre divrec'h ar zant.

« Guspenn mac'h anaveze, gant sikour sklerijen Doue, an dud santel diouz ar bec'herien, Philipp a vele an amzer da zont, rak diskleria a reaz da galz a dud ar stad a vuez ma oant galvet ennan gant Doue. Kinniget e oue d'ezan henoriou braz, met respount a reaz atao: nan.

Mervel a reaz er bloaz 1595, d'he bevar ugent vloaz. Seiz vloaz var 'n ugent goude, ar Pab Gregor XV hel lakeaz var an aoteriou.

KENTELIOU SANT PHILIPP NERI :

I. — An den a gar Doue a greiz kaloun, hag en deuz piasanted er vuez, en deuz mall da vervel evit mont da velet Doue d'ar baradoz.

II. — Penaoz e c'hell eun den hag a anavez madelez Doue, karet tra ebed nemetan? Penaoz karet eun dra all nemet evit Doue hag e Doue?

III. — O va Doue, c'houi a gemen d'in ho karet. Na din oc'h da veza karet! perak n'oc'h euz roet d'in nemet eur galoun, ha c'hoaz eur galoun ker bian?

SONJOMP ERVAD :

Choum a reomp souezet pa lennomp peger braz e oa devosion ar zant-man, pa lavare an oferen, pegement e tomme karantez Doue he galoun hag he vizach; pegement a zaelou a rede euz he zaoulagad. Souezetoc'h e tleomp beza, siouaz! o velet gant pegen nebeut a zoujanz hag a zevosion ec'h heul-lomp sakrifis santel an oferen, hag e tostaomp ouz an daol Fask. O va Doue, pardounit d'in va ienien, entanit va c'houlou gant ho karantez birvidik.

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Sant Bed, Doktor euz an Iliz

(672-735)

Bed a oa ganet e Bro-Zaoz, tost d'ar Skoss, er bloaz 672. He gerent her c'hasaz d'ar skol gant sant Beneat Biskop, da gouent Weremouth : an Abad santel-man a roaz d'ezan epad seiz vloaz kenteliou kaer, hag a zeskaz d'ezan skianchou ar bed. Da c'houde, Beneat her c'hasaz d'eur gouent all evit achui he studi gant ar vistri guizicka, hag, abarz pell amzer, Bed a oue desket braz : mont a reaz da vanac'h d'he naontek vloaz. Heuil a reaz penn da benn reolen ar gouent evel he Vreudeur, tremen a rea an nemorant euz he amzer o studia al levriou sakr ha skianchou ar bed : ne oa ket eur seurt deskadurez ha ne vije ket anavezet gantan, Desketa ma oa evelato, eo var ar Skritur Zantel ; a veac'h ma tiskroge euz al levr-ze : desket en devoa ar gregach ha langach ar Juzevien, evit entent guelloc'h an oll draou kaer merket el Levriou Sakr.

D'he dregont vloaz, var urz he dad abad, ar zant a oue beleget : divar neuze, var goulen eskop Hexham, ee'h en em lakeaz da ober levriou evit displega ar Skritur Zantel. Renka a reaz sklear ar c'henteliou kaer en doa lennet e levriou an doktored : gouzout a rea kalz traou, abalamour na joume morse dilabour.

Ar vrud euz he zantelez hag euz he vouiziegez a redaz buan dre ar bed, hag an Tad santel ar Pab Serj a zonzaz neuze he c'hervel davetan : « Bez' e rankfen ho » kaout em c'hichen, emezan, evit va zikour, da rei skle- » rijen d'ar gristenien var meur a dra hag a laka anezo » nec'het. » Evelato, ne roaz urz ebet d'ar manac'h santel.

Ar zant a skrivaz kalz a levriou evit difen ha displega al lezen gristen, hag evit kelen an dud. An oll a rente d'ezan meuleudi : Bonifas, eskop ha merzer, a lavare e oa Bed sklerijen an Iliz ; en eur c'honsil, Lanfrank, eun arc'heskop gouiziek braz, a hanve Bed, an doktor dispar.

Epad m'oa c'hoaz beo, levriou ar zant-man a oa kavet ker kaer, ma vezent lennet er gador d'ar bobl epad an ofisou, hag o veza ne c'hellet ket rei d'ezan an hano a zant, e veze lavaret evelhen : « Setu ama kenteliou ar » Venerabl Bed » hag abaoue he varo betek vreman, an hano-ze, ar Venerabl, a zo bet dalc'het varnan.

He vuez santel hag he vertuziou a roe c'hoaz muioc'h a nerz d'he genteliou, setu perak, euz eun niver braz a dud diredet d'he gouent da ober ho studi gantan, eur c'halz anezo a deuz da veza desket ha santel braz.

Dinerzet gant an oad hag al labour, ar manac'h Venerabl a gouezaz goall-glanv. Epad an hanter kant devez ma padaz he glenved diveza, ne ehanaz na da bedi, na da zisplega ar Skritur Zakr : trei a reaz e Saoz evit he genvroiz, Aviel sant Ian.

D'ar meurz araok ar Iaou Bask, e velaz e tostea he heur ziveza : « N'em euz mui pell amzer da veva, » emezan, dizale Doue am galvo euz ar bed-man. Hastit » buan eta digas d'in va zakramanchou diveza, araok » ma 'z in d'ar bed all. » O veza ho resevet, e c'halvaz he oll Vreudeur da bokat d'ezan. Neuze e c'hourvezaz d'an douar, hag e varvaz en eur lavaret gant eur vouez seder : « **Gloria Patri et Filio et Spiritui Sancto** » : daou vloaz ha tri-ugent e oa (735).

He gorf a daolaz eur c'houez vad dudiuz, enterret e oue da genta e kouent Jirvens, ha da c'houde, he relegou a oue lakeat gant re sant Kuthbert e kouent Durham. Ar Pab Leon XIII en deuz diskleriet ema e renk ar zent hag an Doktored.

SONJOMP ERVAD :

An den Venerabl, Bed, a dremenaz he vuez o pedi, o studia ar Skritur Sakr, hag o tisplega komzou Doue d'an dud. Dont a reaz da veza eur zant en doare-ze. Kemeromp skouer diou-

tan. Levriou ar gristenien a zo ar c'hatekiz, an histor zantel hag an Aviel: lennomp eta al levriou-ze en eur bedi Doue da rei sklerijen d'eomp da entent mad ar c'henteliou dudiuz a zo merket enno.

Doue a skleraio hor spered dre ar feiz, a gennerzo hor bolontez gant he c'hrasou, hag a lakaio he zantelez hag he garantez da entana hor c'halonou.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Sant Aogustin, Eskop Kantorberi

Ar zant-man a oa manac'h e Roum en amzer ar pab sant Gregor. Ar pab en devoa bet ar zontj da brezeg al lezen gristen e Breiz-Vraz pe Vro-Zaoz, met pa oue hanvet Pab, na c'helle mui mont di he-unan. Pedi a reaz eta Aogustin da vont en he leac'h.

Var gomz an Tad Santel, Aogustin hag he Vreudeur en em lakeaz en hent, met kristenien ar Frans a lavaraz d'ezo : « Na c'hellit ober vad ebed e Bro-Zaoz. » Aogustin, nec'het maro, a zistroaz da Roum. Sant Gregor a velaz raktal e oa an drouk-spered oc'h enebi ouz he gannadet. « Eun honor hag eur c'hfas kaer eo » d'eoc'h, emezan, mont di da brezeg ar feiz; karet a » rafen beza ganeoc'h. Kerzit gant fizianz, rak Doue » a roio skoazel d'eoc'h. »

Kenmerzet gant bennoz an Tad Santel, ar visionerien a dreuzaz ar Frans hag ar mor, hag a joumaz en enez Thanet, tost da zouar Bro-Zaoz, e rouantelez Kant. D'ar mare-ze, Ethelbert a oa roue eno. Aogustin a gasaz eur c'hammad da lavaret d'ezan euz he berz, e teue euz Roum da ginnig d'ezan eur rouantelez dreist pep hini all. Ar roue en devoa klevet hano euz ar relijion gristen, rak Bere'hed, he c'hreg, mere'h da roue Paris, a oa bet badezet; Ethelbert a respountaz eta: « An » estren a deu ama da brezeg ar C'hrist, a c'hell beza » dinec'h, me ho mago betek gulet. »

Abenn nebeut amzer goude, e teuez Ethelbert da enez Thanet da velet ar visionerien; ar re-man a ieaz e proesion d'he ziambroug; dougen a reant eur groaz arc'hant gant imach Jesus e koat livet, kana a reant al litanioù, hag e lavarent pedennou evito ho-unan hag evit tud ar vro. O veza deut betek ar roue, Aogustin a brezegaz d'ezan al lezen gristen. Ar roue he zelaoue gant evez ha gant doujanz: « Biskoaz, emezan, n'em euz » klevet traou ker kaer »-hag evit merka he anaoudegez vad, e pedaz ar visionerien da zont da joum da Kantorberi, kear benn he rouantelez; rei a reaz d'ezo ar frankiz da brezeg ho feiz evel ma plijfe ganto. Senti a rejont ouz mouez ar roue.

Kelennet gant ar visionerien ha gant he bried, ar roue a resevaz ar vadiziant gant eur c'halz euz he zujidi: lod da c'houel braz ar Pantekost (597), lod all da c'houel Nedelek. Ouspenn dek mil paian a oue badezet en unan euz ar goueliou-ze.

Neuze Aogustin, evit senti ouz ar Pab, a ieaz da gaout arc'heskop Arles, er Frans; eno e oue sakret arc'heskop gant ar garg da ren oll gristenien Bro-Zaoz. Kerkent ha ma oue distro d'ar gear, e sakraz daouzek eskop, evit ma vije sklerijenmet, easoc'h a-ze, paianed ar vro.

Bez' e oa, en amzer-ze, en eur c'horn euz ar vro hanvet Bro ar Galled, demdost d'an Irland, kristenien renet gant ho beleien hag ho eskibien, met ar re-man na gredent ket mont da sklerijenna ar broiou en dro d'ezho, rak ho c'hristenien a veze atao e brezel ouz ar Zaozon. Ar zant a vodaz e konsil an oll eskibien, re ar Galled hag ar re en doa nevez sakret, hag a zougaz lezennou leun a furnez evit brasa mad ar relijion e Bro-Zaoz a bez.

Aogustin a gasaz, da c'houde, eskibien ha beleien, el leac'hioù o doa ar muia ezom, hag a nebeudou, Bro-Zaoz a droaz kasi-oll gant ar guir Doue. Ar roue Ethelbert a oa laouen gant Bere'hed, he bried santel, met an arc'heskop a oa ken laouen all.

Sant Aogustin a varvaz er bloaz 604; hanvet e vez abostol Bro-Zaoz.

SONJOMP ERVAD :

Ar visionerien o kuitât ho bro, evel sant Aogustin hag he venec'h, evit mont da brezeg ar feiz d'ar baianed, ne ouzont ket pe seurt digemer o dezo; leac'h o deuz da gaout aoun da veza goall gaset, hag avechou da veza merzeriet. An Aotrou Doue a ro d'ezo kaloun da labourat evitan, skuill a ra he vennoz var ho labour, hag e veler neuze ar baianed o tont da veza kristenien ha sent.

O velet hor Mam Zantel an Hiz oc'h en em asten dre ar bed oll, meulomp Doue hag he visionerien kalounek, kemeroomp skouer diouto, pe da viana sikouromp anezo dre hor pedennou, ha dre aluzen Breuriez ar Feiz da c'hounit eneoù da Zoue: Doue hor paeo en he varadoz.

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ MAE

Santez Mari Madalen Passy, Leanez

(1566-1607)

Al leanez santel-man, ganet e Florans, d'an 2 a viz ebrel 1566, a oue hanvet da genta Katell pe Gatharin. He zud a oa pinvidik ha devot, met Hor Zalver he-unan a sklerijennaz hag a skoliarz ar vere'h a-vianik: d'he zeiz vloaz, e c'houie ober **orezon**.

Pa veze bet he mam o kommunia, Katharinik a dostea outi ar muia ma c'helle: « C'houez an Aotrou Doue » a vez ganeoc'h, emezi, goude ar gommunion. » Iun a reaz a-vianik, ober a reaz zoken eur gurunen spern da lakât var he fenn; dougen a rea ar gurunen-ze epad an noz. Kement a garantez e doa evit Jesus e Sakramant an Aoter, ma oue laosket da ober he Fask kenta, pell araok ar vugale all.

Divar neuze, e reaz veu da joun bepred guere'hez: pedi a rea bemdez dioc'h ar mintin, epad peder heur,

var he daoulin. Eun deiz, he zad a doullaz kaoz d'ezhi divar benn dimezi: « Guell e ve ganen, eme ar zantez, » mervel dioc'htu, eget ne deo mont e stad ar briede- » lez. » An tad a respountaz: « Na vezi ket dimezet en despet d'id, met da leanez n'ez i ket ken nebeud. »

Var bouez poania kalz, ha skuilla daelou puill, ar zantez e devoue konje da vont da leanez; mont a reaz en Urz Karmel, abalamour seurezed an Urz-se a gommunie bemdez: guisket e oue d'he c'houezek vloaz, ober a reaz he veuiou braz d'ar 17 a viz mae 1584. He hano leanez a oue Mari-Madalen.

Divar neuze, ar zantez a reaz pinijennou brasoc'h c'hoaz, met ive, douget e veze aliez a spered betek en env. Eun devez, e reaz d'Hor Zalver goulen an Abostol sant Paol: « Va Doue, petra a fell d'eoec'h e rafen? » Jesus a respountaz d'ezhi: « Grit pinijen evit ar bec'he- » rien. »

Ar zantez a c'houlennaz neuze iun atao divar bara ha dour, ha bale diarc'hen. Al leanez huella, hanvet ar Vam, a zifennaz outi beza ker rust-se outi he-unan; met ne c'hounezaz netra o vont eneb Doue. Mari Madalen a viskaz eur re voutou, dre zentidigez, pa oue goure'hemennet d'ezhi, met na c'helle ket bale ganto; debri a rea kig, met heb gellout dale'her tam ebet. Ar Vam a blegaz: bolontez Doue a oa sklear; Mari Madalen a c'hellaz ren eur vuez euz ar re strisa.

Divar neuze, Mari Madalen a oue devotoc'h c'hoaz. Eun devez, devet-dreist gant tan karantez Doue, Mari Madalen a redaz betek an aoter, hag a bokaz d'ar grusif en eur lavaret: « O karantez! karantez! den n'hoc'h » anavez, den na gar ac'hanoc'h! »

Guelet a reaz eun deiz sant Louis Gonzag er baradoz, — marvet e oa e miz even 1591, — hag e lavaraz er meaz anezhi he-unan: « Oh! na peger kaer eo gloar Louis, » mab Ignas Loyola! Biken n'em bije kredet, panevede » m'em euz guelet. »

Doue evit amprou he zervicherez, a reaz d'ezhi diouret peb konsolasion, epad eun amzer. En despet d'ar zec'hor vraz-se, ar zantez a gendale'has da bedi evel

ma rea araok: ne zante saour ebet gant he fedemou, met ne lavare ket eur Bater nebeutoc'h. Kreski a reaz zoken he fedemou hag he finijennou: hag eun devez ma lavare he c'hovesour d'ezi: « Dizale n'o pezo mui poan » ebet, » hi a respountaz kerKent: « Va zad, na glaskan » na plijadur nak eürusted var an douar, karet a rafen » divoaska poan betek va heur ziveza. »

Eur zell taolet var ar grusifi a roe kaloun d'ezi. Mervel a reaz d'he bloaz ha daou-ugent, goude beza resevet he zakramanchou diveza gant eur garantez birvidik, er bloaz 1607.

Pa oue kleyet, e Florans, hano euz maro al leanez santel, an dud a ziredaz, hag en ho zouez, eun den griet gant an techou fall. Mont a reaz tost-tost d'ar varv-skaon; kerKent korf dinam ar vere'hez a finvaz, hag a droaz varzu an tu all, evit merka, eur vech muioc'h, pegement a heuz e doa ouz ar pec'hed.

Hirio e'hoaz, korf Mari Madalen a zo choumet en he bez, fresk-beo.

SONJOMP ERVAD :

Ger ar zantez-man a oa « *Pati, aut mori* » da lavaret eo « gouzanv, pe vervel » ha Doue en deuz roet he goulen d'ezi; gouzanv e deuz great betek he maro. Choumet eo pur hed he buez, great e deuz piniennou braz; hag evelato, tentet eo bet gant an drouk-spered, dizec'het eo bet he ene epad meur a vloaz. Kendalc'het e deuz e leac'h koll kaloun, abalamour m'e deuz dalc'het mad d'he fedemou. Deskomp gant ar zantez-man beza mad da lavaret hor pedemou, atao.



AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ MAE

Santez Jeann d'Arc, Guerc'hez Orleans

(1412-1431)



Santez Jeann d'Arc, gloar hag honor bro Frans, a c'hanaz e bourk Domremy e kichen Vaucouleurs, var harzou ar Champagn hag al Lorren, d'ar 6 a viz genver 1412. He zud a oa tud devot braz, met tud

dister hervez ar bed. En he bugaleach e reaz al labour var dro an ti, pe ez eaz da ziouall he chatal; ne zonje nemet e Doue, douget e oa da bedi ar muia ma c'helle en iliz parrez.

He c'halon a oa entanet gant he c'harantez evit he nesa, gueleet a rea ar re glanv, sec'ha a rea d'elou an dud glac'haret, ker karantezuz e oa e kenver an oll ma roaz avechou he guele he-unan da veachourien skuiz-maro. En doare-ze eo e tremenaz he buez, sioul ha didrouz, betek he zrivac'h vloaz.

Eur gear grenv hebken, Orleans, a joume c'hoaz a du gant Charles VII, met kele'het e oa stris gant ar Zaozon.

En trubuillou-ze, a greiz m'o doa an dud a vrezel brudeta kollet kalon ha fizians, ar vro a oue saveteat gant eur vere'h. Pevar bloaz araok e doa gueleet an arc'heal sant Mikeal, kalz elez en dro d'ezhan; klevet e doa mouez an arc'heal-se, rener braz brezellou Doue; gouc'hemen a rea d'ezhi mont buan da Orleans, ha bledia goude Charles betek Reims, evit beza kurunet.

Ar vere'h iouank a oue souezet da genta, met gant an archeal e velaz ive santez Katharin ha santez Marc'harit, klevet a rea aliez ho **Moueziou**, setu ma soublaz da volontez an env. Guestla a reaz he guerc'hded da Zoue.

Dies e oue d'ezhi choum heb diskleria an traou-ze d'he zud, diesoc'h c'hoaz ho lavaret da hiniennou anezho. Evelato, goude m'e devoue gellet renka an traou, he contr a vleniaz anezhi, var he goulenn, betek gouarnner Vaucouleurs, Robert de Baudricourt. Hema na reaz da genta nemet goapât ar vere'hez iaouank; da c'houde, e choumaz eur pennad brao a amzer da bleustri he lavarou; rei a reaz d'ezhi erfin, armou ha tud a vrezel d'he diouall ha d'he difen, hed he beach, betek lez ar roue.

Pa oue ar plac'h santel dirak Charles VII, ha p'e devoue diskleriet d'ezhan traou kuzet ouz an oll, traou ha ne c'hellent beza anavezet nemet ganthan hebken, e lakeaz anezhi e penn he zoudardet, hag e reaz d'ezhi mont da Orleans.

Eat e kear, Jeann a drec'haz an enebourien ker buan ha tra, pilat a reaz, hini hag hini, an oll kestell a gelec'he kear, kestell braz ha kestell bian, ha sevel a reaz he banniel var ar mogeriou. Ober a reaz kement all en oll geariou kloz a oa var dro Orleans, douara a reaz ar Zaozon var dachen emgann Patay, ha da c'houde e reaz d'ar roue lezirek loc'h evit mont da Reims, ha reseo he gurunen.

M'en defe ar roue sikouret Jeann, e defe skarzet ar Frans euz an oll Zaozon, rak ar galloud-se e doa bet digant Doue, met kuzulerien Charles, gant avi ouz ar zantez, a joumaz heb rei soudarded d'ezhi. Hi, neuze, a roaz he buez evit silvidigez ar vro.

Kemeret e oue gant ar Bourguignoniz e kichen kear Compiegn, hag ar re-man a oue digalon aoualc'h evit he guerza d'ar Zaozon o doa sonj ober d'ezhi gouzanv ar maro krisa. Kaset e oue da Rouen, stlejet dirak al lezvarn; an oll rebechou, nemet unan, a oue great d'ezhi: ne oue morse tamallet da veza great an distera tra eneb ar guerc'hdet kristen. Barnerien guerzet eo a renaz ar prosez, a zougaz ar zetans; ar vere'hez divlam a oue barnet d'an tan. Divoaska a reaz he foan gant nerz kalon, mervel a reaz d'an 30 viz mae 1431, he daoulagad savet var Kroaz Hor Zalver, pedemou birvidik var he muzellou; goude beza goulenmet, digant ar boblad tud a oa eno, pardon evit ar re a rea dezhi mervel.

Pevar bloaz var 'n ugent goude he maro, ar Pab Calixt III a gargaz eskop Reims hag eun nebeut re all da velet ha great mad e oa bet ar varmedigez kenta. Ar varmedigez-se a oue torret, diskleriet e oue e tlie beza henoret Jeann, servicherez santel an Aotrou Doue. Barnet e oa bet d'ar maro, heb abeg vad ebet.

An Tad santel ar Pab Pie X en deuz diskleriet, d'an 18 a viz ebril 1909, ema Jeann e renk an dud eüruz er baradoz.

Ar Pab Beneat XV, goude eun enklask nevez, en deuz kahieret Jeann d'Ark var roll ar zentezed, d'ar 16 a viz mae 1920, dirak 60 kardinal, 300 eskop pe arc'heskop, ha 89.000 kristen.

SONJOMP ERVAD :

Buez Jeann d'Arc a zo bet souezuz, er penn diveza, met senti e deuz great ouz an Aotrou Doue. Sentomp eveldi, hag e kavimp ar baradoz, goude poaniou ar vuez-man.

AR C'HENTA DEVEZ HA TREGONT A VIZ MAE

Santez Anjela Merisi, Guere'hez

(1474-1540)

Ar zantez-man a oa ganet en eur gearik, c'houec'h leo euz a Vrescia en Itali, er bloaz 1474. He c'herent a oa tui a renk huel hag a zoujanz Doue : lennet e veze Buez ar Zent, bemdez, en ho zi, hag ar Bater vras a veze lavaret. A-vianik, evit plijout da Zoue ha kemeret skouer diouz ar zent, ar plac'hik a reaz he zonz da joun bepred guere'hez : beilla a rea gant ar brasa evez evit miret en he c'haloun lilien gaer ar guere'hezed. Gened Anjela a oa braz; bez e doa eur pennad bleo kaer dispar, met e leac'h en em ficha brao evel ar merc'hed all, hi a rea fae var ar gened; aoun e doa da blijout d'an dud, ne glaske nemet plijout da Zoue, e doa kemeret da bried.

Choumet minorez d'he dek vloaz, Anjela a oue savet gant eun contr d'ezhi: mont a reaz neuze e Trede Urz sant Fransez.

Goude maro he contr, Anjela a renaz eur vuez kalc'oc'h c'hoaz: choum a rea betek eiz dez avechou, heb kemeret ken boued nemet ar gommunion zantel.

Anjela e doa brud da veza eur zantez, setu ma c'houlennaz eun den pinvidig diganti eun deiz, ar pez en doa da ober evit beza salvet. — « Dizesk evel ma 'z oun, a » respountaz Anjela, ne oufen lavaret d'eoc'h nemet

» daou c'her: bezit hirio, vare'hoaz ha bemdez evel ma » karfec'h beza da heur ho maro. »

Evit goulenn sklerijen d'he spered, ez eaz da bardouna d'an Douar Zantel. En hent, var aochou ar C'hrêt, e kollaz ar gaeled, da c'houde e oue varnez beza paket gant tuñ digernez, hag erfin, varnez ober pense; met Doue he diouallaz. En Douar Zantel, an dallez ne vele netra gant he daoulagad, evelato na skuize ket o taou-lina hag o pokat d'an douar-ze, rak he feiz a ziskoueze d'ezhi Hor Zalver benniget o veva hag o vervel eno guechall, o santelât atao al leac'hiou-ze. En eur zistrei d'ar gear, e kavaz adarre ar gaeled. Mont a reaz da bardouna da Roum evit pedi var beziou an ebestel, ha dreist holl evit ober he Jubile.

Da c'houde, ar zantez a zistroaz da Vrescia: eun nebeut merc'hed devot a oa eno var e'hed anezi; en em voaza a rejont da vont d'he zi, ha da zelaou he c'henteliou. Neuze Doue a gomzaz c'hoaz ouz Anjela: santez Ursula en em ziskouezaz d'ezhi e penn eun toullad guere'hezed, en eur lavaret: « C'houi ive a vezo e penn » eur rumad kaer a leanezed, ha deut eo breman ar » mare d'eoc'h da zével eun Urz nevez »: merka a reaz d'ezhi eur reolen evito. Anjela ne gollaz ket a amzer: diskleria a reaz en dro d'ezhi bolontez Doue, hag e savaz eun Urz dindan hano santez Ursula evit kelemmadurez ar merc'hed iaouank. Ren a reaz an Urz nevez epad pevar bloaz hebken; d'he c'houec'h vloaz ha tri-ugent, ar zantez a rentaz d'he Doue he ene leun a veritou, er bloaz 1540.

Epad tregont devez, he c'horf a jomaz var ar varv-skaon henvel ouz eur c'horf beo: diskleriet e deuz, p'edo var he zremenvan, e padfe Urz santez Ursula betek fin ar bed.

SONJOMP ERVAD :

An den er bed-man a fell dezan aliez ober he benn; pedi a ra Doue da rei d'ezan buan ar grasou en deuz c'hoant da gaout, ha dont a ra d'en em glem pa n'en deuz ket he c'houlenn dioc'htu. Hogen ar zantez-man a ro d'eomp eur skouer all: ne ehane da c'houlenn sklerijen digant Doue, ha Doue a

rea d'ezhi gortoz: koll a reaz ar guelel, trubiou all a c'hoarvezaz ganti, met ne gollaz ket a fizianz betek ma plijas gant Doue merka d'ezhi he hent. Kemeromp skouer diouti: e leac'h klask kaout pep tra d'hor c'hoant, lakeomp hor fizianz e Doue, pedomp anezan d'hon hench, ha gortozomp gant pasianted ma plijo gantan hor sklerijenna.

AR C'HENTA DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Ronan, Eskop

Ar zant-man a oa ganet en Irland, var dro ar bloaz 400. He dad hag he vam a oa kristenien; evel m'en devoa eur spered lem, ee'h en em roaz, ez-vianik, d'ar studi. Beleget e oue, eun nebeut goude, great eskop, daoust d'ezan da veza c'hoaz iaouank: reseo a reaz ar garg-se en despet d'ezan, koulz lavaret. D'an ampoent, ar vro a oa dismantret gant enebourien kriz, hanvet ar Skosed. Ronan a zonzaz neuze tec'het, rak seblantout a rea d'ezan klevet mouez Doue ouz her gervel larkoc'h. Treuzi a reaz ar mor evit dont da Vreiz-Izel: disken a reaz var douar Leon, hag e choazaz, evit ober he ermitach, eur c'hoat, e leac'h m'ema hirio ar gear vian, hanvet Lokournan. Goudeze e treuzaz mor pe rad Brest, evit mont e kostez Kerne. Eno ee'h en em dennaz e koat Nevet, el leac'h a zoug breman he hano: Lokronan.

Digouezet el leac'h-se, sant Ronan a reaz anaoudegez gant eun den mad euz ar c'harter; skoazellet gantan, e savaz eno eun ermitach hag eur chapel. Met ne oue ket lezet e peoc'h. Greg an den-man, hanvet Keban, e doa kement a gasoni oc'h ar zant, ma ieaz meur a vech betek he ermitach evit lavaret traou d'ezan. Ronan a c'houzanve ar rebechou heb ober van. Kement a zousder hag a basianted a reaz da Geban kounnari muioc'h mui; mont a reaz da Gemper da gaout ar roue Grallon,

hag e tamallaz ar Zant da veza lazet he merc'h. Ar Roue, leun a fizians en he c'homzou, a reaz gervel Ronan d'he balez. Ar zant n'en devoue ket a boan o tiskouez e oa Keban eur gaouiadez euz ar re voasa, hag hiviziken ar Roue a ziskouezaz eun istim vraz evitan. Ar bobl, kounnaret, a c'houlenne maro Keban, met Ronan a c'hellaz savetei anezhi. Var a gounter, ar zant, dre he bedennou, a rentaz ar vuez da vere'h Keban: mouget e oa bet er c'hrouf m'e doa kuzet he mam anezhi.

Ar vrud euz he zantelez o veza eat dre bevar c'horn ar vro, eun niver braz a dud a zirede d'he velet. Ronan a dec'haz neuze diouz he ermitach evit mont larkoc'h en douar braz. Kredi a reer e ieaz da joum en eur c'hoat, e leac'h m'ema hirio iliz Brieec hag e varvas eno. He relegou a oue digaset divezatoc'h d'ar chapelik en doa savet e koat Nevet. Keban, kounnaret atao, ouz ar zant, a glaskaz ober drouk d'ar c'horf, hag a oue lounket ez-veo gant an douar, var a leverer. Kearik Lokronan a zo bet savet en dro da vez ar zant.

Evit gouzout peger beo eo choumet an devosion a zouger da zant Ronan, it da Lokronan pa vez great an Tromeni vraz (an **Tromenihi** a zigouez bep c'houec'h vloaz: (1929 ha 1935): guelet a reot eur c'halz pardounerien devot, oc'h ober tro ar menez, evel m'her grea ar zant pa veve eno.

SONJOMP ERVAD :

Sant Ronan a oa humbl; hed he vuez e stourmaz heb chan evit tec'het araok an henoriou, ha beva kuzet. Ma kuiteaz he ermitach, ne oue ket abalamour d'ar goall gomzou a lavare Keban d'ezan, met abalamour ma felle d'ezan beva kuzet; rei a rea dre eno eur gentel gaer d'an dud ourgouilluz.

Sant Ronan a zo bet tamallet e faoz; met, e leac'h renta drouk evit drouk, e teu da bedi evit he enebourez ha da gaout ar pardoun evithi; lakât a ra zoken da zont e buez, he merc'h, maro dre he faot d'ezhi. Pebez santel gaer c'hoaz evit an dud na fell ket d'ezo pardouni, a vag kasouni en ho c'haloun ouz ho enebourien!

AN EIL DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Marsellin, Sant Per ha Sant Erasm Merzerien

Ar zent-man a zo bet merzeriet en amzer an impalaer Dioklesian. Per ha Marsellin a veve ho daou e Roum; met Marsellin a oa belek, e leac'h Per, kloarek hebken, a c'hortoze beza great abostoler. Per ne guze ket he gasouni ouz an doueou faoz: ho henvel a rea an diaoulou, hag e klaske distrei ar re all d'ho adori, ha da ginnig ezanz d'ezo. Rak-se pa roaz Dioklesian urz da lakât ar gristenien d'ar maro, Per a oue diskuillet gant ar re gente, ha taolet er prizoun. Ar c'hloarek kalouneg a oa iaouen, etel an ebstel guechall, o velet e plije gant Doue rei tro d'ezan da c'houzanv evit he hano santel. Renta a rea nil bennoz da Jesus, o veza m'en doa an honor da zougen chadennou, abalamour d'he feiz.

Ma oa laouen ar prizonnier, goard ar prizoun, he hano Artem, ne oa ket, rak he zaoulagad a zourenne aliez: « Petra oc'h euz, eme Ber d'ezan eur veeh, petra » a ra d'eoc'h gouela evelse? » — « Gouela a ran d'am » mere'h muia karet; abaoue pell zo em a an drouk- » spered en he c'horf, o voall gas anezi; taolet e vez » gantan d'an douar, he muzellou oc'h eonenna. Eur » rann-galoun eo d'in guelet va mere'h lakeat en eur » stad ken truezuz. »

Per a gonsolaz an tad keaz, hag a glaskaz rei fizians d'ezan: « Ho mere'h a vezo pareet, emezan, en noz-man » zoken; me a 'z aio betek emhi, hag a rento d'ezhi ar » iec'hed, en hano Jesus, mab Doue! » — Met Artem n'her c'hredaz ket; penaoz e c'hellje Per terri he jaden- » nou, digeri dor ar prizoun, tremen abiou d'ar goardou a oa o veilla e tal an or, ha dont da ober ar burzud a la- » vare? Ne c'hellje dont d'he di e doare ebet. Pa oue dis- » troet d'ar gear, Artem a gountaz d'he c'hreg komzou ar

prizonnier kristen, en eur lavaret: « Red eo ma vefe » eat he benn digantan, evit komz evelse. » — Met kerkent Per a oa en ti, eur grasifi en he zoum. Artem hag he c'hreg en em strinkaz d'an douar dirazan, ho mere'h a deaz ive da zaoulina en ho c'hichen, hag an drouk-spered a dec'haz dioc'htu diouti en eur ioue'hal estlammuz: « Galloud Mab Doue a zo ganeoc'h, koll a ran- » kan! » Amezeien ha kerent Artem a glevaz kerkent hano euz ar burzud-se, hag a ziredaz d'he di; o velet ar vere'h pare mad, e konesjont d'an douar. « Ni a ador Jesus, Doue ar gristenien! » emezo, hag e c'houlenjont beza badezet. Per a icaz dioc'htu da glask Marsellin; ar beleg a sklerijennaz an oll dud-se var al lezen gristen, hag ho badezaz da c'houde.

Ar gouarner Serenus a gouezaz klanv en devez-se, hag epad he glened, Per ha Marsellin a gelemmaz ar gristenien nevez. Met ar gouarner, kerkent ha ma pareaz, a icaz e koummar ouz Artem hag he dud; ober a reaz skourjeza ar goard en eum doare didruez, hag he deuler er prizoun. Gelver a reaz, da c'houde, Per ha Marsellin dirazan, hag e laoskaz ar malloziou brasa varno, en eur lavaret: « Divoaska a reot poaniou kriz, » ma ne drojt ket kein da Jesus-Christ »; met an daou verzer a reaz fae var he c'hourdrouzou: « Grit d'eomp » ar pez a blijjo ganeoc'h, eme Marsellin, met biken na » nac'himp Hor Zalver benniget. » Serenus a reas skourjeza Marsellin betek ar goad, ha da c'houde he deuler er prizoun; eno e oue lakeat en noaz, ruillet var dammou guer torret, ha lezet en denvalijen heb tam da zibri, na bame da evâ. Per a oue karget a jadennou pouner, ha taolet en eur prizoun all. En devez varlerc'h, Serenus a c'halvaz ar verzerien dirazan, met seulvui m'ho lakea da c'houzanv poan, seulvui e kreske ho nerz kaloun. Neuze ar gouarner a reaz ho dibenna oll; Marsellin, Per, Artem hag ho c'hompagnunez.

D'ar mare-ze ive, e oue skourjezet Erasm, eskop en Antioch. Bez' en devoue kalz da c'houzanv evit ar feiz kristen, met diouallet e oue gant Doue, setu ma var- » vaz en he vele, var dro ar bloaz 303. Henoret eo gant

an Iliz e renk ar verzerien, abalamour d'ar poaniou en deuz gouzanvet evit ar feiz.

SONJOMP ERVAD :

An ebestel hag ar verzerien a c'houzanve ho foaniou gant nerz-kaloun, gant levenez zoken; diskleria a reant ho feiz gant ioul da skuill ho goad, abalamour d'Hor Zalver. Ho feiz eo a rea ho nerz-kaloun, rak ar feiz eo a zesk d'ar merzer, en dezo eur gurunen gaer er baradoz, ma choum fidel da Zoue betek ar maro. Karomp Doue eveldo, ha diouallomp rak ar pec'hed.

AN TREDE DEVEZ A VIZ EVEN

Santez Klotild, Rouanez Frans

(475-543)

Ar zantez-man a oa mere'h da Chilperik, roue ar Bourgogn. He vertuziou a oa kaer, rak choum a rea ato humbl ha modest, ha ne zouge nemet dillad gloan. Bez' ez oa skouer prinsezed he amzer.

Klovis, roue Frans, o klevet he meuli kement, a c'hoanteaz he c'haout da bried. Kaset e oue kelou d'ezi a gement-se, met Klotild a enebaz eur pennadik, rak ar roue ne oa ket kristen; evelato e roaz d'ezan he asant, en esper he c'hounit da Zoue. Klovis a ieaz d'he diambroug betek kear Soissons, el leac'h ma oue great an eured.

Eur vech dimezet, Klotild a oue mall ganti komz d'ar roue euz ar relijion gristen, hag he alia da drei kein d'he zoueou faoz. Klovis, leun a respet hag a istim evit he bried, a zelaouaz he oll gomzou; dre ma kaozee, he galoun a zeblante zoken tenerât, met aon en doa o

chench buez: kalz digareziou a gave da rei. Asanti a reaz goulskoude ma vije badezet ar bugel kenta a roaz Doue d'ezan, met ar c'hrouadur a varvaz prest goude beza resevet ar vadisiant, setu ma ieaz ar Roue en egar. An eil mab, badezet ive kerkent ha ma oue ganet, a gouezaz klanv d'he dro, setu ma 'z eaz Klovis en eur gounnar vraz. Klotild, leun a fizians e Doue, en em roaz d'ar beden, hag ar c'hrouadur a oue pareet. Klovis a anevaz neuze pegen gallouduz e oa Doue ar gristenien, heb na zeuaz goulskoude he galoun da zigeri d'ar feiz kristen: aoun en doa atao da goll karantez he zujidi.

D'ar mare-ze, an Allemanted, hon enebourien a viskoaz, o doa diskleriet brezel d'ar roue, ha Klovis a ieaz e penn he arme evit enebi outo. An emgann vraz a oue e Tolbiak: ar stourmad a oa en he voasa, p'en em lakeaz an dizurs etouez soudarded Klovis; he-unan edo varnez koueza etre daouarn he enebourien. Neuze e teuaz da zonz d'ezan euz komzou he bried: « Ma sav beac'h varnoud, goulen sikour va Doue, Doue ar gristenien, hen a roio d'id ar gounid. » En eur zavel he zivreaec'h etrezek an env, e lavaraz neuze: « Doue ar gristenien, ho kalloud, hervez Klotild, a zo brasoc'h eget » hini an doueou a zervichan; roit d'in ar viktor, hag » hiviziken ne adorin ken Doue nemedoc'h. » A veac'h m'en doa peurachuet he gomzou, ma velaz he nerz o tont d'ezan adarre: leun a fizians e Doue ar gristenien, e saillaz var an enebourien gant an nebeut soudarded a oa chomet gantan, hag e c'houezaz eur viktor euz ar re gaera. Koueza a reaz raktal d'an daoulin var blasen an emgann, en eur lavaret: « Salver, c'houi hebken » a zo Doue; hiviziken ne adorin nemedoc'h-hu. »

Goude ar gounid kaer-ze, Klovis en em lakeaz e stad da reseo ar vadisiant. Sant Remi, eskop Reims, her c'helennaz var guirioneziou ar relijion, hag a vadezaz anezan er bloaz 496. Evit trugarekât Doue, Klovis a zavaz divezatoc'h, e Paris, eun iliz gaer en honor d'an ebestel sant Per sant Paol, hanvet da c'houde, iliz Santez-Jenovefa: sevel a reaz ive meur a gouent.

Goude maro ar roue, santez Klotild en em dennaz e kear Tours. Eno ec'h en em roaz d'ar beden, d'ar iun, hag e kastize he c'horf dre bep seurt piniennou. Mervel a reaz d'an 3 a viz even 545, goude beza resevet he zakramanchou diveza.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Klotild a lakeas ar roue, he fried, da jench buez. Eur c'hreg fur hag a zoujans Doue, eme Salomon, a zo eun tenzor ha n'euz priz ebet d'ezan. Pebez vad a ra var spered ha var galoun eur pried, eur c'hreg a gar Doue, a anavez mad he fried, a ra peb tra evit kaout he garantez, ha gellout dre eno he c'hounit da Zoue.


II. — Santez Klotild ne zouge nemet dillad gloan; n'en em fiche morse, met guisket deread e veze atao. Gragez ha merc'hed, c'houi hag a gar plijadureziou ar bed, kemerit skoñer var ar zantez-man. An den a zalc'h he ene en eur stad santel, ne dle ket en em zale kalz d'en em ficha en he viskamant.



AR PEVARE DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Fransez Karacciolo

(1563-1608)



Lezit ar vugale vian da zont davedon :
eme Jesus-Christ d'he ebestel.

Ar zant-man a zo ganet en Itali, a dud a renk huel, er bloaz 1563. A-vianik e oa devot d'ar Verc'hez, e rea pinijen hag e oa mad ouz ar paour. D'an oad a zaou vloaz var 'n ugent e reaz eur c'hlenved braz, neuze e reaz he zonzj d'en em rei oll da Zoue hiviziken, ha da zervicha he nesa. Guerza a reaz he zanvez, hag e rannaz an arc'hant d'ar beorien: neuze ez eaz da Napl da ober he studi. Abenn daou vloaz e oue beleget, ha lavaret a reaz an oferen gant devosion eun eal. Digemeret e oue en eur vreurie santel, ha divar neuze e renaz eur vuez parfetoc'h c'hoaz; heuill a rea, betek ho zremen-van, an dud koundaonet d'ar maro, evit ho zikour da vervel santelamant.

Eun devez e oue digaset d'ezan eul lizer skrivet evit eun all, hag a zouge ar memez hano gantan, al lizer a lavare e oa e Napl daou zen devot o sevel eun Urz nevez; goulenn a reant anezan da vont ganto. Ar zant o kredi da genta e oa al lizer-ze evitan, a lennaz anezan; kerkent e sonjaz e oa galvet gant Doue da zikour sevel an Urz-se. Mont a reaz eta da gaout an daou zen santel: kounta a reaz d'ezo perak e teue daveto, hag ho zri neuze e rentjont bennoz da Zoue en doa ho henechet.

Klask a rejont eul leac'h distro, hag eno e pedent Doue hag e c'houlennent skerijen an eil digant egile evit anaout pe seurt reolen e vije ar guella da heuill.

Kerkent ha m'c devoue achuet reolen ho Urz, e teujont d'hen diskouez d'an Tad Santel ar Pab Sixt V: ar Pab he c'havaz mad, hag a skrivaz var ar reolen ar c'homzou-man: « Relijiuzed an Urz o deuz difen da » veza hanvet da gargou huel en Iliz: » rei a reaz da venec'h an Urz an hano a **Gloareged Bian**.

O veza bet bennoz an Tad Santel ar Pab, an tri Vreur a zistroaz da Napl da ober ho veniou; neuze eo e keme-raz ar zant, devot braz da zant Franses Assis, an hano a Fransez, rak diagent e oa hanvet Askanio. Adornio a oue lakeat da zuperior kenta, met mervel a reaz a benn daou vloaz, ha neuze Fransez a oue hanvet en he leac'h.

Ar zant a renaz an Urz gant furnez ha santelez, gou-

len a rea digant he Vreudeur daou zra dreist-oll: ober pinijen evit ar bec'herien, ha beza mad da adori Hor Zalver e sakramant an Aoter. En traou-ze koulz hag e peb tra, Fransez a oa eur skouer evit an oll.

An Tad Santel ar Pab Paul IV a ginnigaz d'ezan he-noriou kaer, met ar zant a lavaraz nan atao. Na reaz biskoaz an distera pec'hed enep ar burete. Eun devez, plac'hed divezet o veza deut d'he denti, ar zant ho gounezaz da Zoue.

Devot braz e oa d'ar Zakramant meulet ra vezo, evel m'eo bet diskleriet hueloc'h, ha choum a rea avechou hed an noz dirak an aoter, da adori Hor Zalver.

Mervel a reaz d'he bevar bloaz ha daou-ugent, en eur lavaret: « Deomp! Deomp! — Da he leac'h ez aimp, Tad Fransez? a c'houlennaz he Vreudeur. — D'ar baradoz! D'ar baradoz! » eme ar zant, laouen oll. Var ar c'homzou-ze, he ene a nijaz varzu Doue, er bloaz 1608.

SONJOMP ERVAD:

Eüruz an den a gar Doue a greiz kaloun, eüruz eo, rak karet eo ive gant Doue. Piou a lavaro madelez Doue e kerver he vignoned? ne c'hortoz ket ar vuez eternal evit ho renta eüruz; epad ar vuez-man e laka ho c'haloun da veza leun a beoc'h, a zousder, a levenez, dre he garantez ha dre an esperanz da vont d'ar baradoz.

Evit guir, ar zent n'emaint ket heb kaout kroaziou epad ho buez, met ar groaz a zo skanv da zougen d'an nep en deuz skoazel an Aotrou Doue d'he zikour, hag a zonzj, ez euz eur gurunen evitan en env. Lavaret a ra gant sant Paol: « Va ene a zo leun a levenez e kreiz va oll foaniou. » E leac'h klask plijadureziou ar bed, lakeomp hor c'houstianz e stad vad, ha poaniomp da garet Doue ha d'he zervicha.



AR PEMPED DEVEZ A VIZ EVEN

SANT BONIFAS, ARC'HEKOP HA MERZER

Er bloaz 718, eur manac'h euz a Vro-Zaoz a stoue e Roum, dirak an Tad Santel ar Pab Gregor II, hag a c'houlenne digantan ar galloud da vont da brezeg an Aviel en Allemagn, hanvet d'ar mare-ze ar Jermani. Gregor II a zelaouaz ar beden-ze, rak ar manac'h a oa eun den a skiant hag eur beleg santel, hag a roaz d'ezan an oll galloud a ro ar Pabed d'ar veleien a zo e penn misionou.

Ar manac'h-se, Winfrid he hano, a oa bet ganet ha badezet e Bro-Zaoz er bloaz 680 ; eat iaouank d'ar skol en eur gouent, e oa bet lakeat abred da gelen ar re all, rak he zeskadurez a oa braz. Met n'en em blije ket en he vro : c'hoant en doa da sklerijenna paianed, ha setu perak e oa eat eun devez d'ar Jermani, evit kentelia an dud divadez-se. Kaset e oue kuit ganto. Winfrid a oa distroet d'he gouent e Bro-Zaoz, eno e oue digemeret gant levezeg; met hanvet e oue superior gant ar venec'h all, ha kerkent e tec'haz: aoun en doa rak an henoriou.

E leac'h mont var eün d'ar Jermani, Winfrid a iez da Roum, evel m'eo bet lavaret, ha goude m'en devoue resevet aotre ha bennöz ar Pab, e skoaz varzu ar Jermani, da glask eur vro hanvet an Thuringj.

Eno e oa bet kristenien, met ker gouez hag ar baianed e oant deut da veza gant an amzer, abalamour n'o doa, pell a oa, beleg ebet da gelen anezo.

Dre he brezegennou ha dre he zaelou, ar zant a lakeaz ar vertuziou kristen da ren a nevez er vro, ober a reaz da galz paianed trei kein d'an idolou, ha pa 'z eaz da Roum evit an eil guech, da renta kount d'ar Pab euz

al labour en doa great en Thuringj, e oue sakret eskop pe gentoc'h arc'heskop. Gregor a lavaraz d'ezan neuze: « Hiviziken, ne viot mui hanvet Winfrid, met Bonifas. »

Eur vech distro d'ar Jermani, ar zant a labouraz gant eun nerz nevez: goulennet en doa sikour digant ar verzerien a zo ho beziou hag ho relegou e Roum, hag eur galloud braz en doa bet digant ar Pab. Doue a oa ive a du gantan, dre ar miraklou kaer a rea d'ezan ober.

Eun devez ma prezege ar zant e kreiz an Thuringj, e oue komzet d'ezan euz eur vezen vraz, eur vezen zero, henoret gant tud ar vro. Ar zant a lavaraz: « Ober a rin diskar ar vezen-ze »; hag ez eaz kerkent en hent varzu enni. Ar baianed kounnaret a grogaz en ho c'hlezeier; sonj o doa da skei gant kement hini a douchfe ouz ar vezen, met Bonifas a iez dispount betek enni, hag houman a gouezaz gant eun trouz ifern, d'ar c'henta taol bouc'hal a oue roet d'ez. Ar baianed, mantret oll, a anzavaz galloud an Doue a brezege d'ezo an eskop santel, hag e leac'h ober an distera drouk d'ezan, e c'houlenjont ar vadiziant.

Neuze ar zant a zavaz kouenchou; gervel a reaz euz a Vro-Zaoz menezec'h santel da ren ar c'houenchou-ze; leanezed a zeuaz ive euz he vro evit he zikour da gelen ar vugale hag ar merc'hed iaouank: ehench a c'hellaz ar peb brasa euz tud an Thuringj.

Da c'houde, an arc'heskop santel a iez eur vech c'hoaz da Roum, evit goulenn ali an Tad Santel ar Pab; d'an distro, e savaz eskoptiou nevez, e kasaz sklerijen ar feiz da boblou all, hag erfin e sakraz Pepin, roue Frans, hervez ar galloud en doa resevet digant ar Pab.

Paianed ar Jermani a roaz d'ezan kurunen ar verzerien.

Eun devez m'edo an arc'heskop santel o pedi araok he oferen, eun toullad tud difeiz a zaillaz varnan. Ar zant a lavaraz d'he zervicherien: « Na enebit ket, » d'ober petra skuill ar goad? Doue a zaveteio hon » eneo ». Lazet e oue kerkent, hag he zervicherien gantan, d'ar 5 a viz even 755.

SONJOMP ERVAD :

Pa greder stard guirioneziou ar feiz, e reer fae var madou hag henoriou ar bed-man. Ar zant-man, gant he zeskadurez, a c'helle gounit kalz danvez ha reseo kalz henoriou; guelloc'h e kavaz mont da glask poan ha trubuill en eur brezeg an Aviel d'an dud divadez. Sonjal a rea aliez en doa ar baradoz da c'hounit. Pegen dishenvel eo hor zonzonou-ni dioc'h re ar Zent!

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Norbert, Arc'heskop

(1080-1134)

Norbert, ganet er bloaz 1080, a oa mab eun dijentil braz euz an Allemagn. Tremen a reaz an darn vrasa euz he iaouankiz e palez ar rouaned, e kreiz an ebatou; hag evelse, touellet he-unan ganto, e teuz da garet ar bed. Epad 33 bloaz ne zonzaz nemet er plijadureziou, ha kendalc'het en devije da ren ar vuez-se, panevede ma teuz Doue d'her gervel.

Eun devez ma oa eat da bourmen var ar meaz, an oabl a oue goloet en eun taol kount. Eur barr-arnespountuz a zavaz, ar gurun a grozaz, betek zoken koueza charz treid ar pourmener, hag heman a oue pilet d'an douar, semplet: Pa zeuz d'ezan he anaoudegez, ec'h anavezaz, e kement-se, dourn Doue he-unan. Raktal, en eur zonzal e follenteziou he vuez tremenet, e reaz he zonz da ren eur vuez guelloc'h. Mont a ra da gaout arc'heskop Kologn, evit he bedi d'he reseo e niver an dud a Iliz. Resevet e oue, ha kerkent, e viskaz dillad dister, en eur rei, dre eno, da anaout e troe kein d'ar bed ha d'he oll blijadureziou faoz. Eur vech beleget, e verzaz he oll vadou evit ma vije rannet an ar-

c'hant etre ar beorien, hag e ieaz he-unan da brezeg an Aviel.

Bale a rea diarc'hen e kreiz ar goanv, dre an ere'h; dindan he viskamant e touge eur c'houriz reun: iun a rea bemdez, ha ne eve, koulz lavaret, morse a vin. Prezeg a reaz ar feiz el Languedoc, er Guyenn, er Poitou, en Orleans hag e meur a vro all. Mont a rea euz an eil kear d'eben en eur brezeg ar binijen, en eur alia peb hini da ober ar peoc'h gant Doue ha gant an nesa. He gomzou hag he vuez pinijennuz a lakeaz eun niver braz a bec'herien da jench buez; ar vrud euz he vurdoud a reaz d'eur maread tud diredet d'he gaout, ha nikun, memez etouez an dud ar muia aheurtet, na grede he zislavaret.

O veza anavezet he skiant, he fumez hag he zevotion, eskop Laon a bedaz Norbert da joun en he eskopti: « Rei a rin d'eoec'h, emezan, eur gouent vraz da » ren, pe eur plas da zével eur gouent nevez. » Ar zant a reaz sevel eur gouent nevez, gant aotre ar Pab; dont a reaz da veza evelse foundatour eun Urz nevez a venec'h, guisket e guen, hag a heuille reolen sant Aogustin. An Urz a velaz, dizale, kaz tud o c'houlouen beza guisket emman.

Hanvet da arc'heskop e Magdebourg, sant Norbert ne jenchaz netra en he zoare beva. Kendere'hel a reaz da ren eur vuez ken humbl, ker paour, ker pinijennuz ha diagent; labourat a reaz heb ehan da zise'hrizienna techou fall he bobl, ha da lakât en he c'haloun karantez an Aotrou Doue. He varo eüruz a zigouezaz d'ar 6 a viz even 1134; bez' e oa neuze en he bevar bloaz hag hanterkant. Ar Pab Gregor XIII hen diskleriaz sant, er bloaz 1582.

Sant Norbert a vez diskouezet gant eur sibouer en he zourn, evit merka d'eomp ar garantez vraz en doa evit Jezus-Krist er zakramant meulet ra vezo euz an aoter.

KENTELIOU SANT NORBERT :

I. — E palez ar roue ne doun biskoaz en em gavet eüruz, e leac'h er gouent n'em euz biskoaz kavet displijadur.

II. — Bet oun e palez ar rouaned, bet oun el leac'hioù distro hag er gouent, bet oun er c'hargou hag en henoriou, hag em euz desket e peb leac'h n'euz netra guelloc'h eget beza oll da Zoue hag he zervicha ervad: eno ema ar guir eürusdet.

III. — An nep a oar gouzanv he boaniou, a gav enno eur mor a blijadureziou.

IV. — Oll vadou ar bed ne dalvezont ket peoc'h eur goustianz vad.

SONJOMP ERVAD :

Dre eun tarz kurun, Doue a lakeaz Norbert da zistrei ennan he-unan, ha da jench buez. Na ped, etouez an dud a ren eur vuez direol, a zeufe da veza sent braz ma lakfent da dalvezout an darvoudou a zigouez dre ar bed; ho c'haloun a ve distag neuze diouz traou an douar, hag e lakfent ho foan da ober ho zilvidigez. Eun darvoud o koueza varnomp pe var ar re all, eur maro prim, madou kollet, eur c'hlenved, eun displijadur, kement-se oll a zo peurvuia taoliou aberz Doue, evit hon lakât da jench buez. Eurüz an hini a laka da dalvezout ar c'henteliou a ro Doue d'ezan!

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Isidor, Patroun al labourerien

(1070-1170)

Sant Isidor, ganet e kear Madrid, er Spagn, a zo ive patroun ar gear-ze. He dud a oa paour euz madou ar bed, met tud a feiz krenv e oant, ha leun a zoujans Doue. O veza n'o doa ket a beadra da gas ho mab d'ar skoliou braz, e lakejont ho foan d'he zevel mad er gear. Deski a rejont d'ezan lezen Doue, hag ar guirioneziou brasa euz ar feiz; lakât a rejont doue en he spered dre ho c'homzou hag o skoueriou, karantez evit Doue, ha

kasouni ouz ar péc'hed. Isidor a zalc'has sonj euz ar c'henteliou kaer-ze, hag a ziskouezaz epad he vuez en doa ho ententet mad.

Dimezi a reaz d'eur vere'h fur hanvet Mari, ha bis-koaz daou bried n'en em glevjont guelloc'h. Goude m'o devoue bet eur mab, e rejont veu an eil hag egile da veva evel breur ha c'hoar, ha miret o deuz ar veu-ze betek ho maro: dre-ze ive o deuz bet digant Doue bep seurt grasou kaer. Mari, pried Isidor, a zo bet diskle-riet eüruz gant an Iliz, er bloaz 1697.

Evel n'o doa nemet poan ho divreac'h evit beva, e kemerjont eur verouri; ar zant en devoue neuze muioc'h a labour d'ober, met koulskoude ne lezaz ket a gostez he zeveriou a gristen. Lavaret a rea he beden-nou bemdez; bep mintin e save abred, evit gellout mont d'an oferen en iliz an Itroun Varia a oa e kichen he di, goudeze, ez ea d'he labour, en eur zevel he spered etre-zek Doue, evit kinnig d'ezan he boan.

Lod euz an dud a gave abeg ennan hag a ieaz d'hen diskuill d'he vestr: lavaret a rejont d'ezan ne rea he verour nemet koll he amzer o vont d'an iliz bemdez, ha ne hanter labour ket he zouar. An aotrou a gredaz re vuan an teodou fall, hag eun devez, drouk ennan, ez eaz da bark he verour, evit guelet pe da vare ec'h en em gavje, ha penaoz e labourfe. Choum a reaz mantret, pa velaz a ziabell daou alar, unan a bep tu da Isidor, o labourat asamblez gantan. Tostât a reaz kempennik evit guelet petra oa, met abarz m'oa en em gavet tost, na velaz mui nemet ar zant gant he alar. Souezet oll, e c'houlenn digant Isidor petra oa an daou alar all a labour a bep tu d'ezan, hag a oa en em guzet p'oa tosteat. — « Ne oufen ket, a respountaz Isidor, em befe » sikour all ebet nemet hini an Aotrou Doue; he bedi » a ran abarz staga d'am labour, ha goude-ze, e sonjan » ennan aliez. »

Ar mestr a ententaz neuze peger santel e tlie beza al labourer-ze, p'e guir an elez euz an env a deue d'he zikour; guelet a reaz ive neuze e oa douar Isidor ar guella labouret, hag e roe ar brasa gounidegez.

Petra benag n'oa ket pinvidig, Isidor a rea goulskoude kalz vad d'ar paour; avechou e tiouere he-unan eul loden euz he bred evit he ranna gantan; eur burzud eo en defe gellet ober aluzen evel ma rea.

Pa gouezaz klanv, Doue a ziskleriaz d'ezhan devez he varo; e leac'h kemeret spount, e poaniaz, muioc'h c'hoaz eget araok, da gaout eur maro santel. Goulen a reaz he zakramanchou diveza, hag ho reseo a reaz gant kement a feiz hag a garantez, ma tirollaz an amezeien da lenva, ouz he velet hebken. Mervel a reaz evel eur zant, en eur bedi Doue hag ar Vere'hez, er bloaz 1170; kant vloaz benag e oa.

Daou ugent vloaz goude he varo, korf Isidor a oue savet euz ar bez; kavet e oue fresk-beo.

SONJOMP ERVAD :

I. — Al labourer paour-man a zo deut da vezo eur zant en eur veva en he diegez. Petra vir ouzoc'h hu, labourerien ha micherourien, d'en em zantelât ive en eur labourat? Daoust hag amzer eo a vank deoc'h? Met grit da genta ar pezh a zo gourc'hemennet gant Doue: lavarit ho pedennou noz ha mintin, klevit an oferen da zul ha da c'houel, ha neuze Doue ne vanko ket da venniga ho labour.

II. — Korfou ar rouaned, evito da veza bet henoret er bed-man, a zistro ive e Judu er bez, evel korfou an dud all: korf ar zant-man a zo choumet fresk hag en he bez; muioc'h a dal eta ar zantelez eget an henoriou.

III. — Ar zant-man en deuz ranket labourat bemdez, hag en deuz bevet kant vloaz goulskoude: n'eo ket al labour eo a laz an den.



AN EIZVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Medard, Eskop

Ar zant-man, unan euz an eskibien brudet en he amzer, a zo ganet er bloaz 456, e kichen Noyon. Diskouez a reaz, a vianik, eun deneredigez vraz evit ar beorien; avechou zoken e roe d'ezo ar pezh a oa miret d'ezan he unan evit he bred. Heuz en doa ouz traou ar bed; n'en em blijje nemet o sonjal e Doue. He dud, o velet pegen troet e oa var ar vertuz, a skoliaz mad anezan; eur vech beleget, e teuaz buan da veza skouer an dud a iliz. Karget e oue da gelen ar bobl, ha da brezeg d'an dud; hen ober a reaz gant kement a frouez ma oue guelek, heb dale, ar vuez kristen o vont var vellât. He gomzou, he bedennou hag he iunioù a denerrea ar c'halonou kaledet.

Eskop Vermand o veza maro, Medard a oue choazet evit beza eskop en he leac'h. He aked evit gloar Doue ha silvidigez an nesa a oa ker braz, ma veze bepred soursiuz da velet he bobl; na baouez ket da gelen he dud, hag ive d'ho c'honsoli dre ma iea he-unan da gas ho zakramanchou d'ar re ho gouleme, pe a ziskoueze kaout c'hoant ho reseo diouz he zourn.

Ar c'harter tro-var-dro o veza bet dismantret gant ar Vandaled, Medard a ziskouezaz petra c'hell da ober eur pastor karantez evit he bobl, o rei skoazell d'ezan; kennerza a reaz an oll.

D'an ampoent, ar Barbared a oa var-var da zailla var ger Vermand ha da ober skrab enni; an darn vuia euz an dud a dec'he evit gellout savetei ho buez. Ar zant he-unan a iez da jom da Noyon. Eno, Medard a boaniaz da sklerijenna paianed ar vro, met an dud-se, leun a fallagriez, a glaskaz laza an eskop santel.

Doùe n'ho lezaz ket da zeveni eur c'hoant ker kriz, rak ezom en doa c'hoaz euz he zervieher. Ar zant ne fallgalounaz ket, evit kement-se; er c'hountrol, poania a reaz muioc'h-mui da c'hounit kalonou an dud divadez-se, ha dont a reaz a benn, dre he zousder hag he basianted, da c'hounit kalz anezo da feiz Jesus-Christ. Mervel a reaz d'an 8 a viz even euz ar bloaz 545, koz dija.

He gorf a oue sebeliet en iliz-veur Noyon. Ar burzudou a c'hoarvezaz var he vez a reaz d'ar roue Klotair goulou ma vije digaset he relegou da Soissons.

SONJOMP ERVAD :

Dre an dousder e teuer a benn da c'hounit ar c'halounou ar re galeta.

Ar zent oll o deuz karet an dousder; heuillet o deuz hepred anezi, en eur gemeret evelse skouer var Jesus-Christ, rak hen a lavar d'eomp en Aviel: « Deskit ganen oun dous hag humbl a galoun. » Evit gellout heuillet aketuz hag heb poan eur vertuz ker kaer hag a blij kement da Zoue ha d'an dud, eo red karet an nesa, hag en em zisprijout an-unan.

AN NAVED DEVEZ A VIZ EVEN

SANT PRIM HA SANT FELISIAN, MERZERIEU

Prim ha Felisian a oa ginidik euz a Roum; breudeur e oant ho daou, ha paianed. Eur vech gounezet d'ar feiz kristen gant ar pab Felix, n'o devoue ken soursi, epad tregont vloaz, nemed da c'hounit eneou da Zoue, hag ho foan ne oue ket kollet. Met diskuillet e ouent d'an impalaer Dioklesian, ha raktal e oue roet urz da gregi enno. Kerkent ha ma ouent dirazan, an den didruez-se a lavaraz, drouk emman: « O pet sonj euz ar poaniou garo » a zo ouz ho kedal, ma na deuit ket da adori hon » doueou dioc'htu. » — « Kentoc'h mervel eget nac'h » hor feiz » a respountaz an daou vreur kalounek.

Kaset e ouent raktal d'ar prizoun, karget a jadenou, da c'hedal beza barnet. Eun eal a deuaz d'ho

c'hennerza en ho frizoun, hag, en eun taol kount, ho liamou a gouezaz: « O Doue madelezuz, a lavaraz » neuze en daou vreur, ra viot meulet abalamour m'eo » plijet ganeoc'h rei nerz d'ho servieherien, ha terri » ho chadennou evel m'oc'h euz her great guechall » evit sant Per; goude eun hevelep madelez, grit m'on » devezo ive kement a nerz ha sant Per da c'houzanv » hon oll boaniou. »

Ar barner a zonzaz dont easoc'h a benn euz an daou vreur en eur zispartia anezo an eil dioc'h egile; ha setu ma reaz gelver Felisian dirazan. Met, kaer en devoue, na c'hellaz ket beza treac'h d'ezan. Lakât a reaz neuze he skourjeza en eun doare skrijuz, hag he staga ouz eur peul huel, divar bouez he dreid hag he zivrec'h.

Ar barner a iezaz, da c'houde, da gaout Prim. « Ho » preur Felisian, emezan, en deuz sentet ouz urz an » impalaer, ha setu hen breman eüruz; bezit fur evel- » dan, hag o pezo perz er memez eüruset. » Prim a respountaz raktal: « Sentet en deuz ouz roue an env, » met fae en deuz great var gomzou roue an douar. » Anaout a ran an oll boaniou en deuz bet da ziuouaska; » gouzout a ran ive gant pebez nerz kaloun en deuz ho » gouzanvet, ha fizianz am euz, gant gras Doue, da veza » ker stard em feiz. »

O velet na c'helle ket dont a benn anezo, ar barner a reaz taoler an daou vreur d'al loened, evit beza dispennet: met ar re-man ne rejont nemed gourvez ehars treid an daou verzer santel, heb ober drouk ebet d'ezo. Ar mirakl-man a lakeaz pemp kant famill euz a Roum d'en em rei da Zoue. Met ar barner a joumaz bepred aheurtet, hag a lakeaz dibenna an daou vreur santel: ho merzerenti a c'hoarvezaz er bloaz 287.

SONJOMP ERVAD :

Doùe en deuz kosolet ha kennerzet an daou verzer santel-man e kreiz ho foaniou. En em roomp oll da Zoue, ha Doue a vezo oll evidomp. Seul-vui a boan on devezo da ziuouaska, seul-vui e vezimp goall gaset ha dilezet gant an dud, seul-vui Doue hor c'hargo euz he c'hrasou. Doue a zo eur guir vignoun; na zilezo biken ar re her c'har.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Santez Mac'harit, Rouanez

(1046-1093)

Ar zantez - man a oa merc'h vian da Edmond, roue Bro-Zaoz. Rouanez ebet na oue, en he iaouankiz, troet muioc'h egethi var ar vertuz; p'edo c'hoaz krouadur, n'en em blije nemet o pedi hag o lenn leoriou santel, ha m'e dije gellet heuil penn - da - benn he c'hoant, e vije choumet daoulinet, doug an deiz, dirak ar zakramant meulet ra vezo. He c'harantez evit an Itroun Varia a oa ive ker braz, ma tride he c'haloun bevech ma kleve lavaret an hano a Vari.

Ne gare nag ar guiskamanchou kaer nag ar follenteziou, evel an darn vuia euz an dud iaouank; klask a rea dreist peb tra beza mad ha santel. Pa veze lavaret d'ezi e oa guisket re zister, e respoune na dle ket eur rouanez kristen sevel dreist ar re all oc'h en em viska kaer, hag o tougen dillad a briz, met oc'h en em zalc'her fur ha modest. D'an oad - se ive, he c'harantez evit ar beorien a oa ken tener ma oa anat e tlie beza eun deiz eur vam evito. Ar vrud euz he furnez hag euz he vertuz o veza eat betek roue ar Skos, hen - man he goulennaz da bried. Mac'harit a asantaz d'ar goulenn-ze, evit ober plijadur d'he c'herent.

Eviti da veza rouanez, Mac'harit na deuaz ket da laoskat e servich Doue, rak choum a reaz aketuz da bedi. Ne falvezaz morse ganti lakât he bugale etre daouarn re all; ho c'helen a rea he-unan; deski a reaz d'ezo an A, B, C, gant kement a zousder hag a aket, ma vije lavaret ne defe bet netra ken da ober. Lavaret a rea d'ezho diouall da veza touellet gant an henoriou, a dremen evel eur bouill moged; hag en eur ziskouez d'ezo

peger kaer eo an ene a gar ar vertuz, e lakeaz da ren en ho c'haloun karantez Doue; he zi a deuaz da veza eun tiegez e guirionez kristen.

Ar roue, oc'h anaout spered ha furnez he bried, ne falveze d'ezan ober netra a vraz abarz goulenn kuzul diganti. Pa velaz en doa ar roue kement a fizians enni, Mac'harit a zonzaz e mad ar rouantelez: pedi a reaz eta ar roue da zougen lezennoù evit ma vije barnet pep hini hervez al leaded, evit mad an Iliz hag ar vro, hag evit diarben eur maread dizursiou.

Lakât a eure rapari kalz ilizou, hag ober meur a hini all. Sevel a eure ive meur a di evit digemer ar beorien; rak hed he buez e karaz anezo oll evel he bugale, hag int-hi he c'hare evel ho mam. Bemdez, abarz lein, e roe da zibri da nao grouadur paour ha da bevar var 'n ugent euz ar re vraz; aliez memez ez eaz betek an hospitaliou da louzaoui ar re glanv.

E kreiz he oll oberou a drugarez, ar zantez a gave c'hoaz amzer aoualc'h evit klevet diou pe deir oferen bemdez. Ouspenn-ze, e save e kreiz an noz da lavaret offis bian ar Basion, hag hini an Itroun Varia.

Erfin o santout ne devoa mui pell da veva, santez Mac'harit en em lakeaz e stad da renta he ene d'he C'hrouer, en eur ober eur govesion euz he buez penn-da-benn. Mervel a eure d'he 47 vloaz, er bloaz 1093, hag ar pab Imosant IV hel lakeaz e renk ar zentezed, er bloaz 1251.

SONJOMP ERVAD :

Eur rouanez a deu he-unan da gelen he bugale ha zoken da zeski d'ezo lenn. Pa seurt digarez a gavot evit en em zizamma, c'houi, mammou kristen, hag a lavar n'o peuz ket a amzer da gelen ho pugale, a zalc'h anezo goulskoude er gear, kentoc'h eget ho digas d'ar c'hatekiz evit klevet displega guirioneziou ar relijion. Hervez ma lavar d'eomp an abostol sant Paol, ar seurt mammou-ze a zo goasoc'h eget an dud divadez.

Santez Mac'harit, daoust ma oa rouanez, a veve modest hag a zouge dillad dister. Pebez kentel evit merc'hed an amzer vremen! Lod ne gavont ket er staliou mezer, a zan-

vez ker aoualc'h evito, hag hiniennou ne dint nemet hanter visket. Eur guir gristenez a vezo guisket deread, ha netra ken; en doare-ze, e plijo d'an dud a feiz hag a skiant, ha da Zoue ive.

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Barnabas, Abostol

Ar zant-man a oa ganet en enezen Chypr. He hano kenta a oa Joseph; met an ebistel, goude ma oa pignet Jesus-Christ en env, a roaz d'ezan an hano a Varnabas. Test e oa bet euz eur c'halz euz burzudou Hor Zalver.

Sant Barnabas a zo hanvet Abostol, abalamour m'eo eat da brezeg an Aviel dre ar bed, evel an ebistel, goude beza resevet ar Spered Santel er Senakl asamblez ganto. Met n'eo ket unan euz an daouzek a zo bet dibabet gant Hor Zalver, hag a zo hano anezo en Aviel.

Goude beza resevet ar Spered-Santel, Barnabas a ieaz da Antioch da startât er feiz an dud a oa dija gounezet da Zoue, ha, dre he gomzou, e lakeaz niver ar gristenien da greski c'hoaz er vro-ze. Mont a eure goude-ze, gant an abostol sant Paol, da brezeg ar feiz el Licaonii, e Paphos hag er Pamphylii, en eur ober kalz a vad e peb leac'h. Digouezet e kear Listr, sant Paol a bareaz eun den a oa seiset he izili; met ar baianed, o veza sonjet e oa Barnabas hag hen daou Zoue, a glaskaz kinnig eur zakrifis en ho honor. An daou abostol, gant truez outo, a ziskleriaz d'ezho ne oant nemed tud eveldo; er memez amzer e rojont ali d'ezho da drei kein d'ho falz kredennou, ha da anaout evit ho Doue an Hini en deuz krouet an env hag an douar.

Goude beza tremenet dre veur a gear ha beza gounezet kalz eneo da Zoue, an daou abostol a zistroaz da Antioch, en eur veuli hag en eur drugarekât Doue.

Neuze ez ejont da brezeg an Aviel pep hini dioc'h he du: sant Paol a skoaz etrezek an Asie; sant Barnabas a ieaz etrezek ar Chipr: dre he zouder, e c'hounezaz e berr amzer tud an enezen d'ar feiz. Ac'hano ez eaz d'an Itali; prezeg a reaz an Aviel, epad meur a vloaz, e Milan ha tro var dro; tud Milan a anzav sant Barnabas evit ho abostol kenta.

Euz an Itali e tistroaz d'he enezen, ar Chipr; met he brezegennou hag ar burzudou a rea, a dennaz varnan kasouni ar Juzevien. Kroget e oue ennan, stlejet er meaz euz a gear, ha labezet a daoliou mein. He verzerenti en em gavaz, var a greder, d'an 11 a viz even euz ar bloaz 53 goude donedigez Hor Zalver. He gorf a oue kavet er bloaz 488; leor an Aviel a oa var he beultrin.

Setu ama merkou an ebistel:

Sant Per a zoug alc'houeziou ar baradoz;

Sant Andre: eur groaz gant he divreac'h a vichez;

Sant Jakez, breur sant Ian, eur c'hleze, pe baz eur pardouner gant kregin var he zillad pe oc'h he dok;

Sant Ian: en he zourn eur c'halir, gant eun aer pe eun dragon enghan peurliesia;

Sant Thomas: eur skouer pe eul lans;

Sant Jakez, mab Alphee, eur vaz teo, avechou mein;

Sant Philipp: eur groaz; avechou all, mein;

Sant Bartheleme: eur gountel vraz;

Sant Vaze: eur vouc'hal, eul lans, eur skouer pe eur iale'h;

Sant Simon: eun hesken;

Sant Iud pe Thadee: eur c'hleze, eur penn orz, eur groaz;

Sant Mathias: an daouzekved e leac'h Judas, an traitour: eur vouc'hal, eul lans, pe eur iale'h.

Sant Paol, abostol ar baianed, a vez lakeat alies dirak sant Per, gant eur c'hleze hag eul leor.

Merkou ar pevar Aviel: a zo:

Sant Ian, abostol hag Aviel: eun naer (aigle);

Sant Vaze, abostol hag Aviel: eun eal;

Sant Mark: eul leon;

Sant Lukas: eun ejen.

SONJOMP ERVAD :

Doe hebken a c'hell meuli deread ar zent dre ma anavez ervad ho vertuziou hag ho mirit. Setu ama penaos e teu Doue, dre c'hinou sant Lukas, da ober meuleudi sant Barnabas: « Bez' e oa eun den leun euz ar Spered-Santel. » Ma teuer da renta meuleudi da zant Barnabas, n'eo ket abalamour d'he skiant ha d'he spered lem, nag abalamour d'an oll donezonou all a c'helle da gaout, met abalamour d'he zantelez hebken. Karet a rea Doue. Ha c'houi, daoust hag eur guir garantez o peuz evit an Aotrou Doue?

AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Ian a Zant-Fagondez

(1430-1479)

Sant Ian e oa ganet er Spagn. Rei a reaz a-vihanik merkou euz ar furnez hag euz ar zantelez a lïe da gaout eun deiz, rak d'an ampoent ma 'z oa c'hoaz krouadur, e roe kuzulioù hag e rea prezegennou d'ar vugale all, evit ho dougen da garet Doue ha d'he zervicha ervad. Pa vele eun trouz benag o sevel etrezo, e tirede raktal da lakât an unani en ho zouez, ha d'ho renta adarre mignoured.

Goude m'en devoa peure'hreat he studi, eskop Burgos her greaz chaloni; eur garantez birvidik en doa evit ar zant, abalamour d'he furnez. Met ma oa he vuez direbech, Ian a c'hoantea beza c'hoaz guelloc'h; c'hoant en doa terri var neat an techou fall a oa e goeled he galoun. Setu perak e tilezaz he garg evit tee'het diouz ar bed; mont a reaz en eul leac'h distro, pell dioc'h an trouz; eno ee'h oferenne bemdez, hag e kelenne ar bobl hervez Doue.

O veza kouezet klanv, e reaz ven da ren eur vuez rustoc'h c'hoaz, ma rofe Doue ar iec'hed d'ezan en dro.

Kerkent ha ma oue pare, e roaz d'eur paour ar vella euz an diou viskamant en doa, hag ez eaz en eur gouent euz a Urz sant Aogustin. Resevet e oue eno gant joa, hag e teuaz buan da veza eur skouer evit he Vreudeur dre he zentidigez, he humilite hag he aked d'ar beden.

D'an ampoent e savaz freuz e kear Salamank; an dud en em laze etrezo; ar goad a ruille dre ar ruiou hag ar plasennou. Ar zant na espernaz netra evit lakât ar peoc'h da ren etre keariz; dre ar prezegennou a rea d'an oll, dre ar c'huzulioù mad a roe da bep hini, e nevezaz heb dale ar vro: e leac'h ar gasouni e oue guelet ar garantez o ren; e leac'h an trouz, ar peoc'h. Epad an dispac'h-se, eun den reuzeudik a glaskaz terri he benn d'ar zant gant eun taol baz; met he vreae'h a joumaz sounnet betek ma teuaz da c'houlenn pardoun.

Sant Ian a lavare he oferen gant eur feiz ker birvidik, ma teuaz Jesus-Christ d'en em ziskouez d'ezan meur a vech e-pad ar zakrifis santel. Doue a roaz d'ezan ive ar galloud da anaout an amzer da zont, ha da lenn, er c'halonou, ar pec'hejou ar muia kuzet. Diskleria a reaz an deiz ma lïe mervel, ha goude beza resevet he zakramanchou diveza gant eun devosion dispar, e rentaz he ene da Zoue, d'an unnek a viz even 1479.

SONJOMP ERVAD :

O veza c'hoaz krouadur, sant Ian a Zant-Fagondez, pa vele eun tam kaoz benag o sevel etre ar vugale, a lakea ar peoc'h etrezo, ha raktal e teuent da veza mignoured adarre. Digas a reaz ive ar peoc'h e kar Salamank pa zavaz freuz etouez ar bobl. N'eo ket aoualc'h evidomp beva didrouz gant hon nesa; poaniomp ive da lakât ar peoc'h etouez ar re all, ha dreist oll etouez hon amzeien. Eüruz ar re a gar beva didrouz! « Eüruz an dud a beoc'h, eme Hor Zalver, rak gal- » vet e vezint bugale Doue. »

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Anton a Badou

(1185-1231)

Ar zant-man a oa ganet e Lisbonne, er Portugal, er bloaz 1195. En em denna a reaz, hag hen iaouank c'hoaz, en eur gouent e Coimbr, 36 leo diouz Lisbonne. Eiz vloaz a oa abaoe m'edo er gouent-se, pa oue digaset di korfou pemp relijiuz euz a Urs sant Fransez, merzeriet eun nebeut a oa gant an dud divadez. An dra-ze a skoaz eun taol pouner en he galoun; c'hoant en doa ive da skuill he c'hoad evit Jesus-Christ. Goulen a reaz beza resevet er memez Urs; klask a oue great e peb giz kaeat outan, met Anton na zelaouaz nag ar gourdrizou, nag ar goaperez: resevet e oue en Urz sant Fransez, ha kercent ha ma oue aehu he studi gantan, e c'houlennaz mont da brezeg an Aviel d'ar Sarrazined ha d'ar Vorianed.

Eul lestr her c'hasaz etrezek an Afrik, met a veac'h m'en doa lakeat he dreid var an dachen a dlie gounit da Zoue, ma kouezaz klanv. Red e oue d'ezan distrei d'an Europ. Labourat a reaz neuze gant frouez evit silvidigez an eneou dre ar missionou a roaz, rak ar bobl a zirede a bep tu d'he zelaou, hag avechou zoken an dud a deue ken niveruz ma na veze ket braz aouale'h an iliz evit ho reseo. Prezeg a reaz e bear koulz da var ar meaz, er Frans, er Spagn hag en Itali. Doue a roaz d'ezan ive an donezoun a viaklou.

Eun deiz e kavaz var he hent eun heretik aheurtet; na felle d'ezan, a briz ebed, adori Jesus-Christ e Sakramant an Aoter. Ar zant a reaz neuze digas dirazan eur mul ha ne doa debret netra, pell a oa: lakeat e oue dirazi eun tam foen; met ar mul, e leac'h debri ar foen,

a ieaz da stoui dirak ar Zakramant, douget gant ar zant. Eun hevelep burzud a zigoraz he zaoulagad d'an heretik, hag eun niver braz a dud, d'he heul, a jenchaz buez.

Eur vech all e prezege d'eur maread heretiked ha tud libertin, en eur gear tost d'ar mor; ar re-man na felle ket d'ezo he zelaou. Anton, leun a fizians e Doue, a ieas neuze var ribl ar mor, hag, o veza en em droet ouz ar pesked, e komzaz evelhen: « Pa na fell ket d'an dud » selaou komzou Doue, deuit, peskedigou, da zeski » d'ezo penaoz e tle suja ar grouadurien. » Guelet e oue kercent ar mor goloet gant ar pesked. Ar bobl a ziredaz evit beza test euz ar burzud-se, hag ar zant a gomzaz neuze d'ezo, gant nerz, euz galloud an Aotrou Doue: ar gear a bez a oue gounezet d'ar guir feiz.

Diez eo entent en defe sant Anton, epad ken nebeut amzer, gellet ober kement en deuz great, ma na zonjer ket en he garantez vraz evit Jesus-Krist. Doue, d'he dro, a ziskouezaz meur a vech d'he zervicher pegement her c'hare: eun deiz e oue guelet ar zant daoulinet en he gampr, douget a spered betek an env, hag ar mabik Jesus oc'h en em ziskouez dirazan.

Erfin, skuizet ha dinerzet gant he labourou, hag o santout n'en doa mui pell da veva, Anton en em dennaz e kouent Padou; eno eo e varvaz d'an 13 a viz even 1231, d'an oad a 36 bloaz. Daou vloaz ha tregont goude he varo, tud Padou a reaz sevel he relegou evit ho lakât en eun iliz kaer o doa savet en he honor: pa oue digoret he vez, he deod a oa c'hoaz ker fresk ha biskoaz. Sant Anton a vez pedet dreist oll evit kaout an traou dianket.

SONJOMP ERVAD :

Sant Anton a varvaz d'an oad a c'houec'h vloaz ha tregont; iaouank e oa c'hoaz, ha goulskoude, guelit ar vad en deuz great en he vuez. Pa zervicher Doue e guirionez, pa ne garer nemetan, e teuer e nebeud amzer da greski er zantelez, ha dre eno da renta gloar da Zoue.

† † †

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Bazil, Eskop ha Doktor

Sant Bazil, ginidik euz ar C'happados, a oa mab da zantez Emmeliï ha breur da zant Gregor, eskop Nyss. Kaset e oue da studia da Atheen; eno e reaz anaoudegez gant sant Gregor a Nazians, hag, evel m'en doa eur spered dispar, e teuz e berr amzer da veza gouizieg braz var an oll skianchou. Met o veza anavezet pegen didalvez eo skiant ha furnez ar bed, e poaniaz da anaout ar Skritur Zakr dreist oll.

Klask a reaz da c'houde, eul leac'h distro e brô ar Pont, hag eno e renaz eur vuez devot ha pinijennuz. Kouskat a rea var ar c'halet, ha ne zrebe nemet eur pred bemdez; goulskoude, en desped d'he iuniou ha d'he binijennou, e labouraz heb ehan, gant eun nerz kaloun dispar, da c'hounit eneou da Zoue: ober a reaz zoken kement a vad er vro-ze, ma oue choazet da eskop e Sessaree, goude maro Euseb.

Eur vech eskop, Bazil a boaniaz a zevri, dre he gomzou hag he brezegennou, da ober ar brasa mad en he eskopti, gullet a reaz heb dale eur c'halz tud oc'h en em rei da Zoue, hag ar vuez kristen o ren etouez he bobl. Glac'haret e oa o velet stad reuzeudik an heretiked, met na espernaz nag he boan nag he amzer evit ho gounit da Zoue. An impalaer Valens, aheurtet en he falz kredennou, a glaskaz neuze, da genta dre bromesaou kaer, lakât Bazil da zarempred heretiked an amzer-ze, hanvet Arianed, hag evel ne c'helle ket dont a benn anezan, e c'hourdrouzas he gas d'an harlu. « Da be » leac'h e kasot-hu ac'hanon? eme ar zant. An den ne » deo nemet eun divroad er bed-man; va bro eo an env, » ha na anezan ken bro nemeti. » Ar respount-se a

reaz d'an impalaer mont en egar, met kaer en doa gour-drouz, ar zant a joume stard. Eur sekretour a skrivaz ar zetans a dlie kas Bazil er meaz euz ar vro, hag he digasaz da Valens da zina; met p'en em lakeaz da skriva, ar bluen a dorraz; lakât a reaz digas eun eil hag eun drede: oll e ouent torret. O veza goulennet eur bederved pluen, e santaz he zourn o krena. Neuze e krogaz aoun ennan, hag e rogaz ar paper: ar zant a oue eta lezet e peoc'h, ha goude beza great kalz leoriou kaer ha santel, e varvaz, er bloaz 379, pa oa en he vloaz hag hanter-kant. Lakeat eo bet e renk an Doktored.

KENTELIOU SANT BAZIL :

- I. — An den humbl a gar en em viska kempen ha deread.
- II. — Ne rit ket a stad euz ho korf; eun deiz e tle mervel ha koueza e poultr; o pet soursi, er c'hountrol, euz oc'h ene, p'e guir na varvo ket.
- III. — Na stagit ket ho kaloun ouz traou an douar, rak, abred pe zivezad, e rankot ho c'huitât.
- IV. — Evel an ed a hader a zigas gounidegez d'an nep hen laka en douar, evelse ive ar bara a lakeer e dourn ar paour a dalvezo d'an nep her ro.
- V. — Evesait alies evit gullet petra oc'h, a be leac'h e teuit, ha petra viot eun deiz. E pe leac'h edon-me brema ez euz kant vloaz? E pe leac'h e vezin, a benn kant vloaz all ama?
- VI. — Bemnoz, gullet ar pez oc'h euz great, sonjet pe lavaret epad an deiz, evit gullet ar c'hem etre an eil devez hag egile, evit gullet pe c'houi a ia var fallât, pe c'houi a ia var vellât en hent ar zilvidigez.

SONJOMP ERVAD :

Mar doc'h soursiuz euz ho silvidigez, sellit piz en ho kous-tians bemnoz abarz mont da gousket; dre eno e velot, evel en eur mellezour, oll faotou ha defaotou hoc'h ene. Var evez e vezit gant aoun na ve kaillaret ho tillad; hogen, gant pegement muioc'h a evez ne dleit-hu ket klask ho techou fall, hag ho disc'hrizenia euz ho kaloun. Gullet an dud a zo o verza er staliou braz: dalc'her a reont kount euz a bep tra, gant aoun da fazia pe da ankounac'hât eun dra benag;

pegement muioc'h a zoursi ne dleit-hu ket kaout da velet bemdez stad oc'h ene? Dalc'hit souj mad e vezo red d'eoc'h eun deiz renta kount da Zoue euz oc'h oll oberou hag euz an oll grasou o pezo resevet digantan epad ho puez. Hag evit gellout anaout mad stad ho koustianz, pedit Doue d'ho sklerijenna, d'ho sikour, ha guelit neuze ha n'oc'h euz ket offanset anezan dre zonz, dre c'hoant, dre gomz pe dre ober. Lakit goudeze en ho kaloun eur guir geuz d'ho pec'hejou hag eur guir volontez da veza guelloc'h en amzer da zont. An akt a gontrision barfet a reoc'h neuze, gant ar c'hoant da goves kenta ma c'helloc'h a netaio hoc'h ene kerkent. Evelato, red e vezo d'eoc'h kovez ho pec'hejou d'eur beleg, divezatoc'h.

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Santez Jermana Cousin

(1579-1601)

Na paoura buez dirak an dud: na pinvidika buez dirak Doue! Ganet en eun tiegez dister, var ar meaz, e Pibrac, peder leo dioc'h Toulouse, Jermana e deuz bevet er boan. He dourn deou a oa seizet p'eo deut var an douar, ha dre-ze, na c'helle ket labourat ganthan; bez' e doa, ouspenn, klanvennou en he gouzoug.

Koll a reaz he mam abred; he zad a zimezaz a nevez, hag al lez-vam, p'e devoue bugale d'ezhi, a gasaz Jermana, bemdez, da ziouall an denved. « En doare-ze, emezhi, va bugale na bakint ket eur c'hlenved louz benag diouthi. » Pa deue ar pardaez, ar vere'hik a zigase he denved d'ho c'hraou; e leac'h kouskat en eur guele, evel he breudeur ha c'hoarezed, al lez-vere'h a iea da gouskat var eur guchen geuneud seac'h taolet dindan an deleziou.

He bevans a veze atao dister: bara zegal da derri he naoun, dour sklear da derri he zec'hed. An tad ne zifenne ket he vere'h: choum a rea diseblant.

Ma oa an dud dic'hras e kenver Jermana, elez an Aotrou Doue a zelle outhi gant dudi. Ar vere'h iaouank a lavare he fedennou bep mintin, ha pa 'z ea gant he denved var ar meaziou, e tibunne ha chapeled evit goulenn bennoz ar Vere'hez Vari. Mont a rea bep sul da goves ha da gommunia; mont a rea bemdez d'an oferen.

Bep mintin, kerkent ha ma kleve kloc'h oferen, Jermana a zanke troad he c'heiel en douar, hag a rede d'ar iliz, e leac'h choum da neza. Kerkent ha ma veze achu an oferen, ar vere'h a zistroe da gaout he denved, hag ho c'have atao renket en dro d'he c'heiel. Ar bleizi a oa stank ervro d'ar mare-ze, met biskoaz n'euz eat hini euz denved Jermana gantho.

Kaeroc'h so: denved Jermana a veze atao ar re vella maget euz Pibrac, hag ar re o deze ar muia a re vian. En despet da-ze, al lez-vam a voall gase ar vere'h, hag an dud divar-dro, drouk enno abalamour ne iea ket Jermana da redet ar foariou hag ar pardouniou gant ar iaouankizou all, a rea falz devodez anezhi. Ar vere'h na rea van, hag a iea atao ker seder ha tra, gant he hent.

Pedi a rea evithi he-unan, met ober a rea pinijen evit ar bec'herien, rak gouzout a rea e veze ofanset kalz an Aotrou Doue gant ar brotestanted, en amzer-ze.

Abalamour ma poanie, Doue a roe sikour d'ezhi. He zud n'o doa ket kaset anezhi d'ar skol, ha dre-ze, e kreder ervad na ouie ket lenn e leoriou an dud, met lenn a ouie e leor bras an Aotrou Doue a zo digor d'an oll.

Stered an oabl glaz, an heol lugernuz, al loar arc'hantet a zisklerie d'ezhi peger galloudus ha peger fur eo Mestr ha Krouer ar bed; an eost er parkeier, al legumach el liorzou, ar bokedou er foenneier, an drevajou er meaziou a verke d'ezhi madelez an Aotrou Doue.

Jesus er zakramant a gomze freaz ouz he ene, setu ma pede ar Vere'hez Vari, he mam garet, da zikour anezhi da renta da Jesus karantez evit karantez.

Abalamour ma oa kenteliet gant Jesus he-unan, e rea avechou katekiz d'ar vugale a zioualle ho denved eveldi; avechou zoken e ranne he bara gantho, ha goulskoude n'e doa ket re evithi he-unan.

Eun devez goanv, he lez-vam, drouk emhi abalamour m'en doa eun teod fall tamallet Jermana da veza re vrokuz, a deuaz a benn herr varzu ar vere'h iaouank: « Pe seurt a zo ganez en da davancher? emezhi. Sur aoualc'h, te peuz kuzet emhan bara laeret diouz ar gear? » Jermana a zispakaz he zavancher: bleuniou kaer, eur c'houez dudiuz gantho, a ruillaz var an douar.

Ar re a oa var al leac'h a lavaraz: « Jermana a zo eur zantez. » Meur a vech dija, pa veze c'houezet dour ar ster gant ar glaoier, ar vere'h a oa eat d'an oferen en eur dreuzi an dour heb beza glebiet: Doue a oa ganthi.

Divar burzud ar bokedou e kreiz ar goanv, tad Jermana a lavaraz dichek d'he bried: « Jermana a zo va merc'h koulz ha da vugale d'id-te, ober a ri d'ezhi evel d'ar re all, » met ar vere'h santel a c'houlennaz kouskat var ar c'heuneud, evel araok. Eno eo e oue kavet maro, eur mintinvez, d'he daou vloaz var 'n ugent (1601).

Jermana a zo bet diskleriet santez, er bloaz 1867.

SONJOMP ERVAD :

Piou na c'hell ket heuil ar skouer roet gant Jermana Cousin? Ne doa na danvez, na deskadurez. Gounit ho para a c'hellit evel dhi diouz c'huezen ho tal, mad e c'hellit beza, evel di, da rei ar zul da Zoue, da reseo ar zakramanchou aliez, pasiant e viot en ho poaniou, hag ar baradoz a c'hounezot evel di. Guir eo, n'eo ket da lavaret e raio an Aotrou Doue evidoc'h ar burzudou en deuz great e kenver Jermana, met a hent all, ober a c'hellit kement e deuz great.



AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Ian Fransez Rejis

(1597-1640)

Ganet d'an 31 a viz genver euz ar bloaz 1597, en eur gear vian euz a eskopti Narbonn, Ian Fransez a oue badezet abred. He dud a oa euz an noblans vrasa, kas a rejont ar c'hrouadur d'eur skol vad, met eno an den iaouank ne zarempredaz nemet ar re vella, ar re fura euz ar vugale: en em viret a reaz pur atao. Eur vech achu he studi, an den iaouank a joumaz eur pennadik er bed, met ober a reaz eur c'hlenved braz, ha kerkent ha ma oue pare, e c'houlennaz beza resevet en Urz an Tadou Jesuisted; en he naontek vloaz e oa neuze.

E ti an Tadou, Ian Fransez a oue lakeat da ober skol d'ar re all, eur mestr e oa da sklerat ar sperejou, met muioc'h a c'hoant en doa d'ober sent euz he skolaerien, eget n'en doa d'ober tud gouizieg anezo.

Goude m'en devoue great skol, epad eur pennad, ar zant a oue kaset da brezeg, d'al Languedoc, he vro. Staga a reaz d'al labour a zevri, ober a reaz eur vad dreist, dre he gomzou entanet ha dre he vuez santel. Araok an deiz e veze en iliz, o pedi gant devosion; da c'houde, e prezege d'ar bobl, hag e lavare he oferen; prezeg a rea c'hoaz diou pe deir guech bemdez d'an dud, hag an nemorant euz he amzer a dremene er gadorgoves, o selaou ar bec'herien. Netra, nag ar goanv, nag ar skourn, nag ar glao, na c'helle distrans Ian divar he labour: mont a rea atao d'an iliz.

O veza ma kemere kement a boan da ober labour Doue, Hor Zalver a roaz d'ezan grasou euz an dibab; klevet e veze aliez o lavaret ar c'homzou-man: « O va Doue, o » va c'harantez! perak na c'hellan-me ket ho karet » kement ha m'her meritit. »

Goude beza sklerijennet bro al Languedoc, Ian Fransez a iez d'ar Vivare, d'ar Puy; e peb leac'h e c'hadaz komzou Doue, hag e reaz ar vad hervez he c'halloud.

Devosion Ian Fransez Rejis e kenver hor Zalver e Sakramant an Aoter a oa ker braz, ma ne skuize morse en iliz. N'euz fors pegement a boan en deze bet var an deiz, ha pa vije choumet hed an oll amzer, koulz lavaret, o koves hag o prezeg, er penn kenta euz an noz e save euz he vele, hag e tec'he varzu an iliz. Pa na c'helle ket mont ebarz, e choume daoulinet charz an or, he benn noaz, he zaouarn kroaziet, o pedi Jesus da rei d'ezan eneou ar bec'herien.

Sevel a reaz eun nebeut tiez a repu evit ar merc'hed a skouer fall o doa c'hoant da jench buez. Eur c'hristen, klouar he feiz, a lavare d'ezan: « Petra e'hounezoc'h » gant ho tiez? Ho merc'hed a zeui evit eur pennad enno, met tec'het a raint, hag e kouezint en ho » dizursiou koz. » Ar zant a roaz neuze ar respount kaer-man: « Ha pa ne rafen gant va ziez nemet miret » ouz eur pec'hed marvel hebken, na gavo ket d'in em » befe kollet va foan. »

P'en devoue uzet he gorf oc'h entent ouz an eneou, ar zant, skuizet dre ar piniennou kalet a rea, a gouezaz klanv, prest goude Nedelek. P'en devoue resevet he zakramanchou, e c'houlennaz beza kaset en eur c'hraou benag da vervel, « rak, emezan, ne oa ket din da vervel » var eur guele, pa 'z eo guir Mab Doue a zo ganet en » eur c'hraou ha maro var eur groaz. » Respount a oue great d'ezan e oa re zempl evit beza kaset er meaz euz he gampr, hag e choumaz en he vele, he spered a-unan gant Jesus stag ouz ar groaz. D'an deiz diveza euz ar bloaz 1640, eun tamik araok hanternoz, e savaz he zaoulagad varzu an env, hag e lavaraz d'ar **Frer** a veille gantan: « O va Breur, pebez heurvad! guelel a ran » Jesus ha Mari o tont d'am digemeret. Ia, laouen oun » o vervel. Jesus, va Zalver, me a laka va ene etre ho » taouarn. »

Kerkent e tremenaz, d'he 43 bloaz.

SONJOMP ERVAD :

Ian Rejis na zarempredaz biskoaz en he iaouankiz nemet bugale ha skolaerien devot hag a skouer vad: kement-se a zikouraz kalz anezan da viret he burete. Ma karfe an dud iaouank dibaba mignouned vad, fur ha devot, ne gousesfent ket en dizursiou evel ma reont siouaz! ken aliez. Eun aval brein a zo aoualc'h evit koll eur banerad avalou iac'h; eur paotr fall a zo aoualc'h evit koll eun toullad bugale fur.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Herve

Ar zant-man a zo ganet en eskopti Leon, e Lanrioul Guitevede, var a leverer. He dad Hervian, goude beza bet eur pennad amzer e palez ar roue Childebert, evel servicher pe offiser, a deuaz da Vreiz, hag eno e timezaz d'eur plac'h fur ha devot, hanvet Rivanon. Doue a roaz d'ezo eur mab hag a oue hanvet Herve. Dall e oa, guir eo, met mar doa kloz he zaoulagad, he spered a oa digor mad.

D'an ampoent ma oa c'hoaz krouadur, en doa desket dindan envor ar psalmou, an himmou ha pedennou pemdeziek an oferen. He vam a rea skol d'ezan; met goude maro he fried, Rivanon a iez da leanez, hag Herve a oue lakeat etre daouarn sant Ulfol, he contr. Ar zant-man a oa o choum e goeled Leon, en eur c'hoat etre Coat-Meal hag ar Vourc'h-Venn, hervez an doare. Guelel a reer eno, hirio c'hoaz, eur japel en hano Sant Ulfol. Pa 'z eo guir e oa eno, araok, eur japel all en enor d'ar zant, e c'heller kredi eo bet o choum eno.

Herve a joumaz eur bloaveziou benag en ermitach he contr: tremen a rea he amzer o pedi Doue, hag oc'h ober skol d'ar vugale divar dro. Ar c'heaz dall a veze

renet gant eur paotr hag a oa he hano Guic'haran. Eun devez ma oa eat sant Ulfol diouz he ermitach, eur bleiz a zaillas var azen ar zant epad ma rea al labour er park, hag a zebras anezhan. Pa oue distro, Herve a reaz d'ar bleiz mont er stern, hag ober, divar neuze, labour an azen.

Goude beza poaniet, epad eur pennadik amzer, da vont ha da zont en eur brezeg lezen Doue, Herve a glaskaz eun ermitach evit beva pell dioc'h trouz ar bed, hag a iez da Lanhouarne: eno e choumaz.

Mont a reaz ac'hano eun devez: eskibien Breiz-Izel a oa en em vodet gant an noblans, an dud a Iliz hag ar bobl var Mene-Bre evit barn ar c'homt Konomor, muntret he c'hreg, santez Trifina. Ar c'homt a oue exkummuget.

Epad ma tistroe ar zant dall d'ar gear, he eskop, sant Houardon a reaz hent gantan, hag a lavaraz d'ezan: « Herve, gouzout a ran e velit bemdez an env digor. » Daoust ha na c'helfac'h ket, c'houi, dre ho pedennou, » ober d'in gullet ar baradoz digor eur vech ive, eur » vech hebken? — Mar kirit, eme zant Herve, met » evit-se e tougimp eur c'houriz reun, hag e iunimp » epad tri devez, en eur zonzal e Doue, hag en eur bedi » anezan, noz-deiz. « D'an trede devez, e klevjont eur vouez euz an env: « Sellit ha selaouit. » Neuze, ar baradoz a zigoraz azioc'h ho fenn, hag e veljont an nao geur elez, ar batriarched, ar bropheted, an ebestel, ar guerc'hez, ar verzerien, hag e klevjont eur meuleudi dudiuz. Hag an eskop a lavaraz bennoz d'an dall santel.

Eur vech distro d'ar gear, Herve, skoazellet gant tud pinvidik ha karantezuz, a zavaz eur gouent hag eun iliz el leac'h m'ema hirio iliz Lanhouarne: eno e tremenaz an nemorant euz he vuez. Doue a ziskleriaz d'ezan deiz he varo; ha goude beza resevet he zakramanchou dre zaouarn he eskop en doa galvet var he dro, e rentaz he ene d'he Grouer, d'an 22 a viz even, var dro ar bloaz 568. Parrez Lanhouarne e deuz her choazet evit he fatroun.

Bez' ez eus, breman c'hoaz, en eun douar gouez etre

Lanrivoare ha Treouergat, eun doare lochen hanvet ermitach sant Herve: daoust hag ar zant en defe bevet eno, araok pe c'houde m'eo bet gant sant Ulfol?

SONJOMP ERVAD :

Bugale gristen, kemerit skouer dioc'h sant Herve, en eur boania da zeski lezen Doue. Ha c'houi, mammou kristen, kemerit skouer dioc'h Rivanon; eveldi, deskit abred ho c'hatekiz hag ho fedennou d'ho pugale. Eüruz ar vugale o deuz eur vam vad, eur vam devot! Eüruz an tad hag ar vam a vel ho bugale o kreski, er memez amzer, en oad hag er furnez! Eun dever eo evit peb kristen honori ha pedi ar zent, rak ar zent a zo mignoued Doue, ha dre-ze e c'hellont ober kalz vad d'eomp. Met me gred e tleomp honori ha pedi, gant muioc'h a fizians, ar zent o deuz bevet en hor bro, hag a oar ar brezounek eveldomp.

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Mark ha Sant Marsellian, Merzerien

Mark ha Marsellian a oa daou vreur; anavezet mad e oant e Roum evit ho noblans hag ho madou. Ho c'herent a heuille relijion ar baianed; met an daou vreur o devoue an heur da veza skoliet ker mad gant eur mestr kristen, ma teujont da veza ho-unan kristenien.

C'hoant braz o doa da veva dizemez, met evit ober plijadur d'ho zud, e kemerjont pep hini eur pried fur, met paian: en em gonsoli a rejont gouslkoude, o sonjal e c'helfent marteze gounit ho friejou da Zoue.

D'ar mare-ze, Dioklesian a oa pignet var an tron, hag a rea brezel d'ar gristenien, met en despet da gement-se, Mark ha Marsellian a iea dre guz da velet ar brizounerien, ha da bourvei d'ho ezomou. An impalaer, drouk

ennan, a lakeaz kregi enno, hag ho c'hasaz dirak gouarner Roum, met an daou vreur n'o devoue ket a aoun oc'h anzañ ho feiz e Jesus Christ, ha raktal e ouent koundaonet d'ar maro.

Ar zetanz-se a roaz levez da Vark ha da Varselian, met ho c'herent, glac'haret oll, en em strinkaz da dreid ar gouarner, o pedi anezan da c'hedal eur pennadik abarz seveni ar zetans; int-hi a dlie ober ar pez a oa en ho galloud, evit ober d'an daou vreur nac'h ho feiz. Ar barnet a roaz tregont devez d'ezho.

Epad an oll amzer-ze, ho zad, ho mam hag ho friejou a deue bemdez d'ho c'haout evit ho alia da adori doueou an impalaer. Guech e teuent hini hag hini, guech e teuent oll asamblez; lavaret a reant d'ezo, en eur ouela hag en eur hirvoudi, komzou gwest da denerât ar galoun ar muia kaledet. Ho mignoned a rea kement all euz ho zu, hag oll e oant a-unan evit klask ho zrec'hi. Biskoaz ne oue guelet rustoc'h stourmad, ha tregont devez a oa hir evit gellout dere'hel penn atao da gement a enebourien, a deue meur a vech bemdez da glask ho zouella. Gant sikour gras Doue, ha skoazellet gant sant Sebastian, offiser an impalaer, a deue bemdez d'ho c'hennerza dre he aliou mad, an daou vreur o devoue bepred an treac'h; ho nerz kaoun a c'hounezaz zoken ho zad, ho mam hag ho friejou d'ar feiz kristen.

Mark ha Marsellian a oue erfin staget ouz eur peul, dre urz an impalaer, ha treuzet a daoliou lans, er bloaz 286.

SONJOMP ERVAD :

Tad an daou zant-man, ho mam hag ho mignoned, a glaskaz ho dougen da adori an doueou faoz; met kaer o devoue, ne falvezaz ket d'ezo trei kein d'ho Doue. Nag a dud, siouaz! a ia enep ho c'houstians, hag a verz ho ene en aoun da zisplijout da eur mestr, da eur mignoun pe d'ho c'herent. Eur c'hristen, pa vez goulennet digantan eun dra benag kountrol da lezen Doue, ne dle anaout na kar, na mignoun, na tad, na mam; neuze eo e tle diskouez ar garantez en deuz evit he Zoue, en eur zenti outan.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ EVEN

Santez Juliana Falkonieri

(1280-1341)

Juliana a oa ganet e kear Florans, en Itali. He c'herent, tud a renk huel, a oa deut var an oad, ha n'o doa ket c'hoaz a vugale. He zad a reaz sevel eun iliz kaer, en honor d'ar Vere'hez Vari, saludet gant an arc'heal Gabriel: Doue hen digollaz o rei d'ezan ar vere'h-man.

Juliana, azalek he c'havel zoken, a ziskouezaz e tlie beza eur zantez, rak ne ouie c'hoaz nemet balbouza, ha dija e lavare freaz hanoiou santel Jesus ha Mari. Pa deuaz d'an oad a skiant, e poaniaz da gaout ar vertuziou kristen; goulennet a rea kuzul digant he eontr, Alexis: hen-man a roaz d'ezhi kentelioù ha keleennadurez vad, met ker santel e kavaz he nizez, ma lavaraz eun deiz d'ar vam: « N'eo ket eur vere'h, eun eal eo oc'h euz! »

Juliana a oa ker modest en he zellou, ker pur he ene, ma ne deuaz ket an disterra sklabez d'he saotri; e doug he buez, ne zavaz ket eur vech hebken he daoulagad var bizach eur goaz, eur gomz divalo hel lakea da grenn; pa gleve hano euz eur pec'hed braz benag, e venne koueza semplet d'an douar.

D'he c'houezek vloaz, e troaz kein d'ar bed, rei a reaz an dilez euz he danvez, braz goulskoude; ober a reaz fae var ar fortunioù kaer a ginniget d'ezhi, hag ez eaz da gaout eun den santel braz, Philipp Benizi, da ober dirazan ar veu da joum bepred guere'hez. Guiska a reaz neuze sae Trede Urz an Tadou Servited. An Urz-man a oa nevez savet gant Philipp Benizi, ha gant Alexis, eontr Juliana: hou-man a oue ar c'henta resevet en Urz nevez.

Abarz nemeur e oue guelet eur c'halz mere'hed a renk

huel o kerzet da heul Juliana; he mam zoken a zeuaz daved he merc'h, evit beza henchet ganti. Juliana oa bet lakeat da zupiorez; hi eo a skrivaz, eviti hag he leanezed, eur reolen leun a furnez hag a zantelez. An den santel Philipp, en devoa savet an Urz-man, a ana-veze mad vertuziou ar zantez; pa oue varnez mervel, e lavaraz rei da Juliana ar garg da ren an Urz a bez, ar goazed koulz hag ar merc'hed.

Juliana a oa mad da bedi ha da ober pinijen, na skuize ket pa veze var he daoulin, kaskiza a rea he c'horf dre an taoliou skourjez, pokat a rea da c'houliau brein an dud klanv. Kaout a rea, er gommunion zantel, nerz da c'houzanv evit an Aotrou Doue, ha setu perak, pa 'z eaz he diabarz da fall, pa na c'hellaz mui kommunia, e kavas e oa pouner he c'hroaz da zougen.

Eun devez, Juliana, pa ne c'helle mui herzel gant an ioul birvidik e doa da reseo Jesus e sakramant he garantez, a c'houlennaz digant ar beleg a veze var he zro digas da viana dirazi, sakramant an aoter: « Pa » n'oun ket, emezi, evit he reseo a c'hinou, digasit ane- » zan tost d'am c'haloun: hag e vezin eüruz! » — Ar beleg a zentaz, ha pa 'z eaz en dro gant an Aotrou Doue, e c'hoarvezaz eur burzud: an hosti zakr a dec'haz kuit, ha kerkent ar zantez a rentaz he ene da Zoue en eur vouze'hoarzin gant dudi, d'an 19 a viz even euz ar bloaz 1341.

Pa 'z ejot da zebelia korf ar zantez, e oue gnelet roud an hosti zakr gant imach ar grusifi var an tu kleiz d'he feultrin: an hosti zantel ne oa ket eat da goll, Jesus a oa en em roet d'he zervicherez.

SONJOMP ERVAD :

Pep kristen a lavar, meur a vech bemdez, ar c'homzou-man euz ar Bater: « Roit d'omp hirio hor bara pemde- » ziek. » Hor c'horf en deuz naoun bemdez, ha bemdez e roomp d'ezan he vagadurez; hon ene en deuz naoun ive, naoun euz a Zoue. Pa 'z eo guir Jesus a jom ganeomp var an douar dindan spes ar bara e sakramant an aoter, roomp alies ar vagadurez-se d'hon ene. Ar gristenien genta

a gommunie bemdez, evel santez Juliana; Hon Tad Santel ar Pap Pi X a c'houlenn ma teufe ar re a c'hell hen ober, da gommunia bemdez, an dud divar ar meaz koulz hag ar venec'h hag al leanezed; ha tostât a rit-hu ouz an daol zantel alies a ma c'hellit?

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Sylver, Pab ha Merzer

Ar zant-man, ganet ha savet en eur gearik euz ar C'hampani, en Itali, a oue hanvet Pab er bloaz 536, goude maro sant Agapit.

Theodora, impalaerez Konstantinopl, a rene ar bed en amzer-ze, rak he fried ne rea netra nemet gant he asant d'ezi: hi a oa a du gant an heretiked. A veac'h e oa hanvet Sylver, ma kasaz buan eun ofiser da Roum, evit goulenn ma vije lamet an ekumunugen, taolet gant Sant Anaklet var arc'heskop Konstantinopl. Ar Pab nevez a respountaz: « Ne c'hellan ket terri ar » zetans douget gant ar Pab leun a furnez a zo bet » azezet em raok var gador sant Per: an arc'heskop » zo heretik, ha red eo miret outan da skigna he falz » kredennou. » Drouk enni pa glevaz ar c'homzou-ze, an impalaerez a roaz urz d'eun ofiser da lakât unan all e plas Sylver.

An ofiser, Belizer he hano, a c'hinaz da genta, aon en doa rak barnedigez Doue. Met ar rouanez o veza gourc'hemennet startoc'h c'hoaz, Belizer a lavaraz: « Red eo d'in senti. An impalaerez eo a respounto dirak » Doue euz ar boan a rin d'ar Pab. »

Digarez Belizer a oa fall: eun ofiser ne dle ket, var urz he vestr, ober eun dra kountrol da lezen Doue evel ma 'z eo prizounia Vikel Jesus-Christ.

An ofiser a reaz eta kregi er Pab santel, hag he gas en harlu da gear Patar, en Asi Izela, demdost da enez Rhodes.

Eskop Patar a oa eun den Doue; reseo a reaz ar Pab gant an oll honor a zo dleet d'an hini a zalc'h var an douar plas Jesus-Christ, ha mont a reaz he-unan da gaout an impalaer da Gonstantinopl: « Roue, emezan » gant eun hardizegez santel, bez' ez euz meur a roue » er bed, met n'ez euz ha ne c'hell beza nemet eur Pab, » evit ren an oll gristenien. Sylver a zo bet savet dre » vir var gador sant Per; rouaned an douar a dle soubla » d'he c'halloud. »

An impalaer ne anaveze ket ar virionez, araok ma oa eat an eskop d'he gaout; met kerkent ha ma oue sklerijennet, e roaz urz da lakât a nevez ar Pab var he gador e Roum.

Ar re vraz a vez kuzet meur a dro ar virionez outo. Sylver a oue kaset e guirionez d'an Itali var listri an impalaer, met eno soudarded Beliser a grogaz ennan adarre, hag ar Pab santel a oue prizouniet en eun enezen, tost d'an Toskan, en Itali. Eno ar zant en devoue kalz da c'houzanv, rak ar skridou koz a verk d'eomp e varvaz, a benn bloaz, gant an naoun hag an dienez, d'an 20 a viz even euz ar bloaz 538.

Henoret eo en Iliz santel evel merzer: n'en deuz ket goulskoude skuillet he c'hoad evit ar feiz, evel ar zent a zo bet dibennet pe lazet a daoliou kleze, met gouzanv en deuz great evit ar feiz katholik.

SONJOMP ERVAD :

En amzer sant Sylver, an dud e karg ne gredent ket lakât ar gristenien katholik d'ar maro en eun taol; neuze, koulz hag en amzer an impalaer Julian, e viret ouz ar gristenien pinvidik sevel er c'hargou huela, hag e klasket lakât ar re baour da vervel gant an dienez.

Nag a henvedigez a zo etre an amzer-ze hag hon hini! Hirio, ar guir gristenien a vez great brezel d'ezo ive e meur a leac'h, rak tud ar c'houarnamant a zo o kaeat outo, ar muia ma c'hellont. Ar re a zo e karg a vez tregaset ma

reont ho deveriou a gristen, a vez diskaret; ar re n'emaint ket e karg a vez heskinet mar geller; tud paour a vez tennet divar ar roll; mill ha mill dra all a vez great evit hegasi ar gristenien. An eskibien a c'houlen ma teufe ar re o deuz relijion d'en em glevet muioc'h, evit na vefent ket breset en doare ze.

Da c'hortoz, ar gristenien a zalc'h mad d'ho feiz en despet d'ar gaou a vez great outo, a dle kaout sonj e vezint digollet gant Doue, da zeiz ar varn ziveza; sant Sylver en deuz kurunen ar verzerien, int-hi o dezo eur perz benag er gurunen-ze ive.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Loiz Gonzag

(1568-1591)

Ar zant-man, ker brudet dre ar fae a reaz var madou ar bed ha dre ar vuez santel a renaz, a oa mab d'ar prins Ferdinand, markiz a Chatillon, el Lombardi. Ezvihan e oa douget d'ar vertuz ha dreist oll d'ar burete. D'an oad a zeiz vloaz e oa aketuz da lavaret he beden-nou, ha biskoaz na dremenaz eun devez heb kaout sonj anezo; karet a rea ar beden hag ar studi. N'en doa c'hoaz nemet nao bloaz pa reaz veu a jastete, ha karet a rea kement ar vodesti, ma ne grede ket sevel he zaoulagad var eur vaouez, na laoskel he vevl da zont en he gambr, evit he zikour d'en em ziviska dioc'h ar pardaez.

Er bloavez 1580, sant Charles Borromee a deuz da ober eur brèzegen e kear Bresse. Loiz, a oa neuze daouzek vloaz hebken, a ieaz betek ar gear-ze evit reseo he vennoz. Ar zant a oue estlamet o velet ar grasou kaer en devoa roet Doue d'ar c'hrouadur; gourc'hemen a reaz d'ezan ober heb dale he bask kenta; er memez amzer

e roaz d'ezan aliou mad, hag ar prins iaouank n'ho ankounac'heaz biskoaz. Ne oufer ket lavaret gant pebez feiz e resevaz evit ar vech kenta Hor Zalver Jesus-Christ en he galoun; an daelou a zirede euz he zaoulagad a verke aouale'h peger birvidik e oa he garantez. Epad he vuez, e kendalc'haz da gaout eun devosion dener evit ar zakramant meulet ra vezo, ha bemdez e tremene kalz amzer eharz an aoter. Bep sizun e iune eun devez benag; aliez e kouske var ar c'halet; kastiza a rea he gorf en eun doare ken didruez ma veze dalc'h mad ruziet plench he gampr gant he c'hoad.

D'an oad a drivec'h vloaz, Loiz a reaz he zonzj da guitât ar bed evit mont en eun Urz menec'h hanvet Kompagnunez Jesus pe Tadou Jesuisted. He vam a zigemeraz ar c'helou-ze gant levenez, met he dad a roaz he asant gant kalz a boan, rak c'hoant en doa da zere'hel Loiz er bed. A veac'h digouezet er gouent, Loiz a deuz da veza eur skouer evit ar re all: aketuz e oa da viret bepred an oll reolennoù euz he Urs; he garantez evit Doue a oa ker braz ma kastize he gorf dre binijennou rust. Dont a reaz evelse da goll he iec'hed, en hevelep doare ma oue red d'he zuperioed souplât ar reolen evitan. Na gollaz biskoaz ar zonzj euz a Zoue; hag, en eur zigeri he galoun d'he zuperior, ec'h anzavaz ne gave ket d'ezan beza bet dizonzj en he bedennou, hed amzer eun **Ave Maria**, epad c'houec'h miz leun.

O veza kouezet klanv en eur louzaoui tud taget gant eur c'hlenved speguz, Loiz a ziskouezaz eur joa vraz, dre ma ouie e oa tost he heur da vont euz ar bed-man. Epad an tri devez diveza euz he glenved, en eur zere'hel ar grusifî var he galoun, e lavare bep er mare: « Va brasa » c'hoant eo beza unanet gant Jesus-Christ. » D'ar iaou e kreiz eizved ar zakramant, er bloaz 1591, e rentaz e peoc'h he ene d'he Grouer, en eur lavaret ar c'homzou-man: « Va Doue, me a laka va ene etre ho taouarn. » Bez' e oa, neuze, tri bloaz var 'n ugent, tri miz hag unnek devez. Ar Pab Gregor XV hen diskleriaz eüruz er bloaz 1621, hag ar Pab Beneat XIII hen lakeaz e renk ar zent, er bloaz 1727.

SONJOMP ERVAD :

Loiz Gonzag, dre he vuez santel, a zo deut da veza, e nebeut amzer, eur zant bras. Biskoaz n'eo bet enkrezet gant ioulou fall ar c'hig, abalamour m'oa en em lakeat abred da gastiza he gorf dre ar iun hag ar binijen. Tentet e vezit marteze heb ehan dre bep seurt sonjezonou fall, arabat eo d'eoc'h beza souezet euz a gement-se, ma ne fell ket d'eoc'h dioueret netra, en debri hag en eva. Ententit mad eun dra: dies-braz eo d'an den beva chast, e kreiz plijadureziou ar bed-man.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Paolin, Eskop

Ar zant-man a oa ganet en eur gear vian, demdost da Vourdel, er bloaz 353. Evel m'en doa eur spered lem ha ma 'z oa eun den helavar, Paolin, daoust d'ezan da veza c'hoaz iaouank, a oue karget da ren kear Roum en hano an impalaer. Met oll vadou an douar ne dint nemet avel ha moged; ar zant he-unan hen anavezaz goude beza sonjet mad e kement-se; rak-se e roaz an dilez euz he garg. Mont a reaz en eul leac'h distro evit en em zantelât o pedi, o iun, hag o lenn ar Skritur zakr. Guerza a reaz he oll vadou, hag an arc'hant a oue roet d'ar beorien. An dud a veulaz eun hevelep madelez, hag ar vrud euz he zantelez en em skignaz kement, ma oue karet gant an eskibien brudeta: sant Martin, sant Ambroaz ha sant Aogustin.

Ar zant-man a oue varnez koll ar guelet en he iaouankiz, met pareet e oue dre vuzud gant sant Martin, eskop Tours. Eun nebeut bloaveziou goude, e oue beleget, en despet d'ezan koulz lavaret, met var goulen ar bobl oll, deiz Nedelek.

Goude maro eskop Nool, Paolin a oue choazet evit dere'hel he blas. Gouarn a eure he eskopti gant kement a zoursi hag a garantez ma reaz buan kalz vad emnan. Ar bobl a veve e peoc'h, pa deuz eur vanden dud kriz, hanvet Vandaled, da lakât an dismantr er vro. Epad an dispac'h-se, an eskop santel a iea da velet he bobl evit he gemmerza hag he gonsoli; guerza a reaz zoken an oll vadou en doa, evit ho rei d'an dud ezomek.

D'ar memez mare, eme zant Gregor, Paolin a roaz eun testeni kaer euz ar pez a c'hell da ober eun den leun a garantez evit he nesa. Eun intanvez paour, glac'haret oll, en em strinkaz d'he dreid, en eur c'houl-len digantan peadra da brena he mab a oa e sklavach en Afrik. Ar zant en doa dija guerzet kement en doa; ne vele ket penaos rei skoazel d'ar vam glac'haret; met he garantez heb muzul a reaz d'ezan kaout an dro da bourvei d'he ezomou. « N'em euz mui netra, emezan » d'an intanvez, nemet va buez, met mont a rafen » laouen e plas ho mab. » Ar c'hreg a jomaz souezet, na grede ket asanti d'eun dra ker bras: ha goulskoude, e kare he mab euz a greiz he c'haloun. Asanti a reaz evelato; sonjal a rea e c'helfe ar zant kaout an dro da zont kuit ac'hano. Setu ma 'z eaz ar zant d'an Afrik.

Mab kaer roue ar Vandalet o veza bet anaoudegez euz karantez an eskop santel, a reaz kement a stad anezan, m'hen lezaz e liberte, ha d'he heul, an oll gaptived euz he vro. Eaz eo entent gant pebez joa ha pebez henor e oue resevet pa zistroaz d'he eskopti.

Nebeut amzer goude e kouezaz klanv, hag epad he glenved na ehanaz da veuli Doue, ha d'he drugarekât euz an oll grasou en doa resevet digantan. Rei a rea aliou mad da gement hini a zeue d'he velet, hag ho dougen a rea da ren eur vuez santel. Mervel a eure er bloaz 431, pa oa gant he drivac'h vloaz ha tri-ugent: he relegou a zo henoret e kear Nool.

SONJOMP ERVAD :

Penaos e c'helfemp-ni rei hor buez pe hon liberte evit hon nesa, ma na fell ket d'eomp he zikour pa c'hellomp

hen ober heb en em zieza, ma ne roomp ket d'ezan ar pez e c'hellomp da zioueret? O va Doue, mac'h anavezet ho kuir servicherien diouz ho c'harantez e kenver ho nesa, peger bian eo an niver anezo! Kemeromp skouer dioc'h sant Paolin en eur garet ar re all da viana eveldomp hon-unan, en eur ober evitho ar pez a garfemp a ve great evidomp ma vijemp en ho leac'h.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Mari Oigni, Plac'h Eüruz

(1177-1213)

Ar vaonez eüruz-man a vez great anezhi Mari Oigni, abalamour m'eo maro e kearik Oigni: ene e virer c'hoaz he relegou.

Mari a oa ganet e kear Nivel, er Brabant, euz a dud pinvidik braz. Savet e oue e doujanz Doue, ha diskouez a reaz abred e thie kemeret eur plas kaer etouez sperejou eüruz ar baradoz: he furnez a oa dispar, hag eun dudi e oa guelet he modesti hag he devosion. Na c'houlenne nag ar guiskamanchou kaer nag ar braoigou a blij kement d'ar iaouankiz, klask a rea atao he fleg evit en em denna euz a douez an dud, ha beva he unan gant Doue.

C'hoant braz e doa da veza leanez, met he c'herent o doa eur zouj all. Alia a rejont kement ho mere'h, dre gaer ha dre c'hourdrouz, ma rejont d'ezhi plega, ha Mari a zimezaz, iaouank c'hoaz, d'eun dijentil a zoare euz kear.

An daou bried a iezaz d'ho zi ho-unan: eno ar c'hreg santel, e leac'h dilezel ar pedennou hag an devosionou all ma oa beaz da ober, a deuz d'ho c'hreski evel ma kreskaz he finijennou. He fried a oa eüruz o veza ma

kave he c'hreg seder atao: e leac'h difen outi ren ar vuez santel-ze, e rente d'ezhi meuleudi: « Mad a rit, » emezan, gant na reot ket re evit ho iec'hed. » Mari a gomze d'ezan neuze euz ar vertuz a binijen gant kement a nerz, ma teuaz a benn da c'hounit he fried da veva evel di: ober a rejont neuze, ho daou, ar memez pedennou hag ar memez pinijennou.

Goude eur pennad amzer, Mari a ginnigaz d'he fried beva asamblez evel breur ha c'hoar: hag hen a asantaz ganti adarre. Divar neuze, n'o devoue mui ken sonj, ho daou, nemet da vont var zantelât bemdez.

Ranna a rejont d'ar beorien al loden vrasa euz ho danvez, hag ez ejont da joum er penn all da gear, e karter an dud lor, evit kemeret soursi anezho. Tud ar bed a gavaz abek enno, met an daou bried santel a gendale'haz.

Mari en em dennaz, da c'houde, en eul lochen baour henvel ouz eun ermitach: eno e choumaz pevar bloaz, o pedi heb ehana koulz lavaret, rak bez' e deze he leor dirazi bepred, epad he labour zoken. Ren a rea eur vuez kalet meurbet, ne gemere ken magadurez nemet ar pez a oa red evit choum beo: iun a rea, epad ar bloaz, divar bara ha dour, ha ne zebre nemet eur vech en deiz, vardo peder heur. He c'hovesour, Jakes de Vitry, den a zoujanz Doue, kardinal divezatoc'h, en deuz skrivet he buez: « Mari, emezan, a veze douget alies a spered betek » an envou. He c'haloun a zeve gant karantez Doue, hag » he c'homzou a vage ar garantez-se er sperejou, a la- » kea ar bec'herien da c'houlouen pardoun euz ho fec'he- » jou. Lenn a rea en eneo, ha gueleit a rea an amzer » da zont. »

Ar bobl o veza deut da anaout santelez ar zervicherez vraz-man da Zoue, a ziredaz d'he gueleit, met he humilite a reaz d'ezhi tec'het kuit, hag en em guzat e kearik Oigni, evit beva he-unan, er beden hag er binijen. Doue a zigasaz d'ezhi eur c'hlenved hir ha tenn, met he foaniou a rea he levenez. Er bloaz 1213, Mari, d'he c'houec'h vloaz ha tregont, a rentaz da Zoue he ene leun a veritou.

SONJOMP ERVAD :

Ar stad a briedelez, e leac'h lakât devosion ar zantez-man da vianât, a reaz d'ezhi kreski. Pebez kentel evit eun niver braz a verc'hed iaouank, a goll ho devosion kercent ha ma 'z int dimezet! M'o deuz, siouaz! kavet eur pried direol pe zifeiz, pebez dizurz na veler ket en ho zi! Gragez kristen, poagnit da veva e karantez Doue. Mar deo digouezet ganeoc'h kaout eur pried difeiz, dalc'hit stard d'ho teveriou a relijion, bezit humbl ha seder, ha Doue a roio d'eoc'h he c'hrasou evit he c'hounit d'an devosion, ha beva gantan er peoc'h hag er garantez kristen. Sonjit e teuaz pried ar c'hreg santel-man, o velet he vertuziou, da gemeret skouer diouti. Ma na c'hounezit ket ho pried, e c'hounezoc'h, da viana, eur gurunen en env.



AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Ian Vadezour



C'houec'h miz arak ma e'hanaz Hor Zalver Jesus-Christ, Doue a roaz d'ar bed ar prophet braz-man, an hini a dlle digas kelou euz a zonedigez ar Mesias. Ian Vadezour a oa mab da Zakarias ha da zantez Elisabeth; he e'hinivelez hag he vuez a zo bet burzuduz meurbet.

Zakarias a oa o pedi en Templ, pa velaz eun eal hag a lavaraz d'ezan: « Bet o pezo eur mab hag a hanvoe Ian, » braz e vezo dirak Doue; ober a raio joa ha konsolasion » pobl Israel. » Zakarias a respountaz: « Penaos e e'hel- » lomp-ni gortoz ker braz heur vad, koz evel ma 'z » ound? » An eal a lavaraz neuze: « Abalamour m'oc'h » euz difiziet eur ar pez am euz lavaret d'oc'h aberz

» Doue, e'houi a joumo dilavar betek ma teuo da vir » ar pez am euz diskleriet d'oc'h. » Prestik goude, Elisabeth a deuaz da veza mam, ha da zeiz sirkonsizion ar bugel, e oue goulennet digant he dad an hano a vije roet d'ezan. Zakarias a gemeraz eur bluen, hag, hervez m'en doa lavaret d'ezan an eal, a skrivaz: « Ian eo he » hano. » Neuze e teuaz d'ezan ar prezeg a nevez, ha kerkent ec'h en em lakeaz da veuli Doue evit ar burzudou en doa great en he genver; embann a reaz e peb leac'h trugarez an Aotrou Doue da veza digaset ar sklerijen d'eur pobl sebeliet e tenvalijen ar maro, da veza sevenet ar promesaou great da Abraham divar benn ar Mesias. An oll a joumaz souezet, hag e peb leac'h ne oue komzet nemet euz mab Zakarias.

Sant Ian, o veza e'hoaz iaouankik, a glaskaz eul leac'h distro da ober pinijen; n'en doa ken guiskamant nemet eur zae great gant reu kanval; iun ha pedi a rea heb paouez, evit gellout ober guelloc'h a-ze labour Doue var an douar.

D'an oad a nao bloaz var 'n ugent, Doue a lavaraz d'ezan mont da brezeg ar binijen. An oll a zirede a bep tu d'he velet ha d'he glevet: kredi a reant oa hen ar Mesias; met Ian a respounte: « Digaset oun en he raok, ha n'oun ket din da zilasa d'ezan he voutou. »

Sant Ian eo a vadezaz Hor Zalver, setu perak eo hanvet ganeomp Ian Vadezour. Deiz ar vadiziant, e klevaz mouez Doue an Tad o lavaret: « Heman eo va Mab muia » karet, em euz lakeat va oll fizians ennan. » Diskleria a reaz d'an oll, en eur ziskouez Jesus: « Setu ama ar » Mesias, esperans pobl Israël. » Ha sant Ian ne baouezaz ket, hed he vuez, da renta testeni da Jesus: « Oan » Doue, deut da voale'hi pec'hejou ar bed. »

Ar roue Herodes, drouk ennan, dre ma tamalle sant Ian d'ezan ar vuez a skouer fall a rene gant Herodiades, he e'hoar-gaer, a reaz prizounia ar zant. Eun devez ma roe ar roue eur goan vraz da dud he di ha d'he offiserien, merc'h Herodiades a zansaz, hag a blijaz kement da Herodes, ma lavaraz d'ezi goulenn ar pez a garje, hag hen roje d'ezi, ha pa vije zoken an hanter euz he rouan-

telez. Ar plac'h-se a iez neuze da gaout he mam evit gouzout petra da c'houlenn; var he ali, e c'houlennaz penn Ian Vadezour en eur plac'h. Herodes a gasas raktal eur zoudard d'ar prizoun, gant urz da zigas d'ezan penn Ian Vadezour. Evelse eo a varvaz sant Ian, an diveza prophet euz al lezen goz, hag ar c'henta euz al lezen nevez.

He Viz, ar Biz santel-ze a ziskouezaz Mab Doue, Salver ar bed, a zo miret gant kalz a respet hag a zevosion, hirio c'hoaz, e Sant-Ian-ar-Biz. Kredi a reer kement-se, hep ma ve eun artikl a feiz: eno ema meur a gant vloaz so.

SONJOMP ERVAD :

Sant Ian, goude beza renet eur vuez ker pur, goude beza bet santelleat araok he c'hinivelez zoken, en deuz tremenet he vuez oll koulz lavaret, en eul leac'h distro, pell diouz trouz ar bed, hag oc'h en em rei d'ar rusta pinijennou. Hag ar pec'her, goude eur vuez direol, ne fell ket d'ezan klevet komz euz ar binijen; en he zallentez, ne glask nemet an ebatou. Redet a ra etrezek ar plijadureziou, en em blijout a ra er c'hompagnuneziou fall, klask a ra bemdez an tu da bec'hi eaz hag aliez, siouaz d'ezan!

AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Guillou, Abad

Guillou a oa ganet e Verseil en Itali, a dud a renk huel. Koll a reaz abred he dad hag he vam, met he contraden a zoujanz Doue, a generaz soursi anezan, hag a roaz d'ezan eur gelemdurez kristen.

Guillou, a veac'h m'en devoue pevarzek vloaz, a 'z eaz da bardouna betek iliz Sant-Jakes, e Kompostell, er Spagn.

Ober a reaz an hent diare'hen, gant daou gele'h houarn en dro d'ezan. Diez e vefe lavaret pegement a boan a c'houzanvaz gant ar ienien hag an domder, gant an naoun hag ar zec'hed: met he feiz a roe kaloun d'ezan, hag echui a reaz he bardoun gant eun devozion vraz.

A veac'h distro euz a Zant-Jakes, e reaz he zonzj da vont da bardouna d'an Douar Zantel, evit pedi var menez Kalvar, met meur a dra a viraz outan da vont en hent: neuze, e leac'h mont da bell bro, ez eaz da veva he-unan var eur menez.

Eno, epad daou vloaz, e tremenaz an deiz hag eur c'halz euz an noz o pedi hag oc'h ober pinijen.

O veza rentet, eun devez, ar sklerijen d'eun den dall, hen-man a embannaz tro var dro ar burzud great en he genver, ha kalz a dud a ziredaz d'ar menez evit guelet ar zant. Guillou ne c'hellaz ket kuzat outo, hag o velet an oll vrud en devoa, e reaz adarre he zonzj da vont d'an Douar Zantel.

Mont a reaz laouen en hent, met Doue en em ziskouezaz d'ezan, en eur lavaret: « Guelloc'h eo d'eoc'h chourm » er vro: kalz a vad a dleit da ober dre an Itali, hag er » broiou tro var dro. » Ar zant a iez neuze var eur menez hanvet menez Virjil, ha dizale eun niver braz a dud a zeuaz da c'houlenn digantan ho ren var hent ar zantelez. O velet kement-se, Guillou a zavaz eur gouent evito, hag a reaz euz ar menez: Menez ar Vere'hez. Ren a reaz he venec'h, hervez kuzuliou an Aviel, ha reolen sant Beneat. Var bouez prezeg d'he Vreudeur gant nerz, ha muioc'h c'hoaz en eur ren eur vuez santel meurbed, e teuaz a benn d'ho lakât oll da heuil eveldan hent ar zantelez.

Doue a roaz d'ezan an donezoun a viraklou: ar gomz a roe d'an dud mud, ar c'hleved d'ar re vouzar, an nerz d'an dud sempl; parea a reaz euz klenvejou ha ne oa louzou ebet outo. Chench a reaz an dour e guin, ha kalz a viraklou all a reaz c'hoaz: eur beden, ha netra ken, a oa aoualc'h d'ezan evit kement-se.

Brud Guillou a greske bemdez, ha muioc'h mui a dud

a zirede d'he velet, ha da e'houlen beva dindan he e'houarn. He gouent a oa re vian, setu ma rankaz sevel eleiz a gouenchou dre an Itali, evit rei digemer d'an oll.

Roger, roue Napl, her galvaz da zont d'he velet: met epad m'edo ar zant e palez ar roue, e teuz eun itroun vraz da glask he zougen da offansi Doue.

Guillou, sklaset he e'hoad o klevet komzou an itroun, a e'hourvezaz var eur guiskad glaou beo; hi kerkent, tenerreat he e'haloun gant gras Doue, a zirollaz da lenva en eur e'houlen pardoun. Divar neuze, an itroun-ze a jenchaz buez, hag en em roaz d'ar binijen. Ar roue, o klevet hano euz ar burzud, rak ar zant ne oa ket bet devet, a zougaz muioc'h a respet da Villou. Var aliou an den santel, ar roue a lakeaz muioc'h a urz vad en he balez hag en he rouantelez.

Diskleria a reaz d'ar roue ha da veur a hini all pe da vare e varvje; distrei a reaz eun nebeut amzer araok en he gouent, evit sonjal e Doue, easoc'h a ze: mervel a reaz er bloaz 1142.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a glevaz mouez an Aotrou Doue, o verka d'ezan e pe stad e tlie beva. N'eo ket d'eomp da zibaba hor stad a vuez, da Zoue eo, rak gantan ema ar grasou hor heuz ezoum anezo evit ren eur vuez kristen. Ma kemeromp ar stad a zo merket d'eomp a berz Doue, ni on devezo sikour vad digantan da ober hor zilvidigez; met na 'z eomp ket en eur stad heb beza galvet ennan. Dies e vezo d'eomp, anez, ober hor zilvidigez, hag e riskl e vezimp d'en em goll. Abarz kemeret eur stad a vuez, abarz mont da veleg pe d'ar gouent, pe c'hoaz abarz dimezi, goulennomp digant Doue hor sklerijenna, goulennomp kuzul digant hon Tad kovesour; heuilomp neuze a galoun vad mouez an Aotrou Doue, rak merka a ra d'eomp hent hor zilvidigez.



AR C'HOUECHVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Ian ha Sant Paol, Merzerien

Ian ha Paol a oa ginidik euz an Itali: breudeur e oant, hag en em garet a reant meurbed; beva a rejont a-unan atao, e guir gristenien.

An impalaer Constantin, o veza klevet meuli ho furnez, ho galvaz ho daou en he balez, hag ho lakeaz e servich he verc'h muia-karet, ar brinsez Constansia. En amzer-ze, tud gouez ar Sythi o veza saillet var douarou ar Romened, Constantin a gasaz an daou vreur d'an arme, evit choum e kichen ar jeneral Gallikan. Henman, eur paian, a oa eur mestr brezeller, rak peurvuia en deze an treac'h var he enebourien. Er vech-man, an engann a oue hir, an dud gouez en em game evel diaoulou, ha Gallikan a vele he zoudarded o koueza stank var an dachen; poania a rea d'ho ren ha d'ho e'hemmerza, met seul-vui e skoe ar Romened, seul voasoc'h e stourme ar Sythed. Ar Romened a 'z eaz a nebeudou var fallât, hag ar jeneral, lakeat nec'het maro, a zeuz da goll kaloun ha da ober he zonzj da dec'het. Ian ha Paol, an daou offiser santel, a lavaraz d'ezan, neuze en dije ar goumit ma lavarje d'ar guir Doue: « Kristen e vezin. » Gallikan ho zelaouaz, a roaz d'ezo he e'her; kerkent an daou vreur kalounek a reaz eur beden birvidik, a roaz kaloun d'ar zoudarded, hag hep dale, arme Gallikan e devoue ar gounid.

Pa zistroaz ar jeneral da Roum, e tale'haz d'he e'her, hag e reaz fae var an henoriou a oue kinniget d'ezan. Badezet e oue heb dale, rei a reaz ho frankiz d'ar pemp mil sklavour a oa dindannan, hag ez eaz da zervicha Doue en eul leac'h distro. Merzeriet e oue, en amzer an impalaer Julian.

Goude ar brezel-ze, Ian ha Paol a zistroaz da zervich ar brinsez Constansia. Hou-man hag he zad o devoa doujanz ha karantez evito: rei a rejont d'ezo arc'hant, madou ha galloud, o c'houzout e rajent ar guella implij anezo. E guirionez, an daou zant a ranne ho oll vadou d'ar beorien, d'ar vinored, d'an oll dud reuzendik, hag a brezege d'ezo evit ho dougen da Zoue.

Constantin, en eur vervel, a lezaz kalz a vadou gant he zaou zervicher santel. Julian, nac'her he feiz, o veza bet lakeat da impalaer, a c'houlennaz diganto choum en he zervich, evel ma oant bet gant Constantin, met Ian ha Paol a respountaz e oa pec'hed d'ezo choum tost d'eur mestr hag en devoa troet kein da Zoue, hag a roaz an dilez euz ho c'harg. Julian a lavaraz neuze a rankjent kinnig ezanz d'an doueou dindan boan a varo: dek devez a roaz d'ezo d'ober ho zonzj.

An daou vreur ne jounjont ket da argila; ranna a rejont d'ar beorien ho oll danvez, heb dere'hel seurt ebed ganto.

D'an dekved devez, an offiser Teransian a deuaz d'ho c'haout, lakât a reaz dirazo skeuden Jupiter, mestr an doueou faoz: « Unan a zaou, emezan: pe adori Jupiter, » pe vervel. » An daou vreur a zavaz ho daoulagad etrezek an env, hag a lavaraz a-unan: « Kentoc'h mervel eget trei kein da Jesus, ar guir Doue! »

Teransian ne gredaz ket ho lakât d'ar maro dirak an oll, aoun en devoa ne vije deut ar bobl, mignoun d'an daou vreur, da drei ganto ha d'en em zevel en he enep; rak-se e reaz ho dibenna en ho zi, e kreiz an noz, hag ho enterri e kuz.

Da c'houde, an offiser a embannaz e oant kaset d'an harlu, met an Aotrou Doue a ziskuillaz al leac'h m'edo relegou an daou zant, o para, eno, kement hini a veze eat an diaoul en he gorf. Teransian, o veza klevet kement-se, a gasaz da gichen ar bez he vab klanv possedet gant an drouk-spered: ar mab a oue pareet dioc'htu. Teransian hag he dud a c'houlennaz kerkent ar vadiziant: hint-hi eo o deuz skrivet, var a leverer, buez an daou verzer, lakeat d'ar maro er bloaz 362.

SONJOMP ERVAD :

An daou vreur-man o deuz en em garet meurbed en ho buez, ha betek ho maro. Peger kaer ha pegen dudiuz eo guelet ar breudeur oc'h en em ober, hag o veva a-unan e peoc'h! Met pebeuz dizurz ive pa n'en em c'hreont ket, pa zav kasouni ha droulans etrezo! Goulskoude, n'eo ket dibaot guelet ar gerent hag ar breudeur o veva er ienien, oc'h en em gasât, oc'h en em zispenn zoken, o tibri avechou ho feadra gant tud a justis, abalamour d'eur meutad douar pe d'eur voazennik zour. Aotrou Doue! e pe leac'h e vezo karantez, ma n'euz ket etre breudeur?

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Irenee, Eskop ha Merzer

Irenee a oa ganet e kichen kear Smyrn en Asi, er bloaz 120. En he iaouankiz en devoue ar c'hras da vont d'ar skol gant sant Polikarp, eskop Smyrn. An eskop santel-man a oa bet diskibl sant Ian Aviel, hag en devoa desket gantan buez santel ha kelennadurez Hor Zalver. Irenee en devoa eta kavet eur mestr mad: met sant Polikarp a gare ive kalz he ziskibl, abalamour d'he spered lem, ha d'he galoun dinam.

An diskibl a zelaoue gant evez kenteliou he vestr. « Eun dudi e oa, emezan divezatoc'h, klevet Polikarp » o tisplega Aviel sant Ian, he zelaou a rean euz va oll » nerz, kement tra a lavare a veze skrivet doun em » c'haloun; ha breman c'hoaz, em c'hozni, em euz ar » c'hras d'ho c'haout bepred freaz em spered. » E skol sant Polikarp, Irenee a deuaz, dindan nebeut a amzer, da veza gouizieg braz var ar skianchou sakr, met muioc'h a-ze a ioul en devoa da gendere'hel gant ar studi-ze. Setu perak, sant Polikarp o veza bet lakeat d'ar maro, Irenee, evit klevet ar prezegennoù o devoa

great an ebestel all, a ieaz da gaout an Tadou santel a oa bet ho diskibien.

Pa gavaz d'ezan e oa desket aoualc'h, ar zant a skrivas levriou kaer evit sklerijenna an heretiked, hag ho diarbenn el labour fall a reant. Da c'houde, e oue goulennet diganthan mont da zikour sant Pothin, eskop Lyon, hag a oa eat koz. Ar zant a ieaz, hag en em lakeaz da ober oll deveriou he garg gant ar brasa aked; met heretiked hanvet Montanisted o veza roet kentelioù faoz, kristenien Lyon a bedaz sant Irenee d'ho dislavaret, ha da c'houlenn digant ar Pab koundaoni an herezi-ze.

Ar zant a ieaz he-unan da Roum, komz a reaz gant ar Pab, hag e skriva d'he gristenien: « E Roum ema penn » an Iliz, enni ema ar Spered-Santel, hi eo ar vestrez » var an oll ilizou all, hi a gas d'ezo oll ar memez feiz » difazi: dizenti outi a zo tec'het divar an hent mad. » Epad m'edo e Roum, e klevaz lavaret e voall gaset ar gristenien e Lyon: kerkent ar zant a zistroaz varzu ar gear, mall gantan dont da zikour he vreudeur, met kaer en devoue poania, p'en em gavaz e Lyon, an eskop sant Pothin ha kalz a gristenien all o devoa dija skuillet ho goad evit ar feiz. Ar re a joume c'hoaz, kollet ho fastor gantho, a oa ankeniet, met kemmerzet e ouent pa veljont e oa en em gavet Irenee en ho zouez: hel lakât a rejont da eskop.

O sevel er garg huel-ze, ar zant a boaniaz da startât c'hoaz feiz ar gristenien evit ma choumjent fidel da Zoue betek ar maro, n'en devoe ket aoun da riskla he vuez evit rei kaloun d'ar verzerien.

An impalaer paian o veza deut da vervel, ar gristenien a oue lezet e peoc'h. An eskop santel a labouraz neuze da c'hounit da Zoue eneoù ar baianed hag an heretiked; lavaret a rea: « Hor mam Zantel an Iliz a » lenv d'ezo hag a c'houlenn evito digant an Aotrou » Doue ar c'hras d'en em denna euz ho stad truezuz, » da guitât an denvalijen. Pedi a reomp evito a greiz » kaloun, rak ho c'haret a reomp hervez Doue guel- » loc'h eget ma sonj d'ezo en em garet ho-unan; dre » garantez evito eo e klaskomp ho lakât da c'hounit » eürusdet ar baradoz. »

Abalamour na c'helle ket mont he-unan e peb leac'h ma oa ezom, ar zant a zakras eskibien evit mont da brezeg ar feiz d'ar baianed, ha sklerijenna an heretiked. Ar boan a gemere gant an estren, na vire ket outhan da entent ouz he gristenien, skriva a reaz evitho levriou devot meurbet.

Met ar gristenien a oue goall gaset adarre. An Impalaer Septim Sever o veza deut da Lyon, a c'hourc'hemennaz d'he zoudarded laza ar gristenien: en eun devez hebken e oue lakeat d'ar maro naontek mil anezo, gant ho eskop santel er penn araok.

Ho merzerenti gloriuz a zigouezaz er bloaz 202.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en doa eur gasouni vraz meurbed ouz blasphemou ha gevier dizakr an heretiked, met kalz a garantez en doa evito ho-unan; truez en doa outo, o velet ho dallentez hag ar stad reuzeudik ma oant kouezet ennan. Pedi a rea an Aotrou Doue d'ho sklerijenna, ha poania a reaz heb ehan d'ober d'ezo distrei var hent ar baradoz. Daoust ha poania a reomp d'ober d'ar bec'herien distrei var an hent mad?

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Leon II, Pab

Ar zant-man a oa ginidik euz ar Sisil. Mont a reaz abred var ar studi, hag e berr amzer e teuaz da veza desket var skianchou ar bed; gouizieg e oa, dreist oll, var ar gregach hag al latin. Met he vrasa ioul a oa deski ar Skritur Zakr, hag heuill hent ar vertuziou hag ar zantelez. Plijout a rea d'an oll, met hen na felle ket d'ezan plijout d'ar bed: rak-se, o veza achuet he studi,

ez eaz da veleg, ha dizale e oue brudet kenan dre he vouiziegez hag he zevosion. He garantez evit he nesa a oa ker braz, ma ranne etrezho he vadou, hag he vrasa joa a oa rei kaloun d'an dud reuzeudik ha glac'haret. He zantelez hag e garantez evit an dud dister o veza ana-vezet gant an oll, e oue roet d'ezan ar garg da lodenna, etrezo, an aluzennou dastumet en ilizou Roum.

Ar pab Agathon en em gavaz da vervel neuze, ha Leon a oue hanvet da bab en he leac'h: poania a reaz da gaerât ar c'han hag ofisou an Iliz, hag e c'halvaz e konsil Konstantinopl dek eskop hag eiz ugent. Ar c'honsil a embannaz eo red kredi dindan boan da veza daonet, ez euz e Jesus-Christ diou volonteiz, evel ma 'z euz diou natur; met eur peñsounach hebken.

Ar pab santel-man a oa truezuz e kenver ar bec'herien vrasa, digemeret a reaz gant dousder ha karantez daou heretik, hanvet Anastas ha Leons; diskleria a reaz d'ezo ar virionez en eun doare ker splamm, m'ho lakeaz da anzañ e oant bet faziet. Anastas ha Leons a jenchaz evel daou all en ho flas, en em rei a rejont da embann al lezen gristen, hervez ma lavar d'comp an Iliz he c'hredi. Ma oa Leon madelezuz e kenver ar bec'herien a deue da anzañ ho faziou, ha da zistrei a vir galoun d'ar gelemadurez guirion, e talc'he stard evelato var ar re a joume aheurtet en ho dallentez, ha kaledet en ho fallagriez. Ho c'helen a rea heb damanti, hag ho c'hastiza a rea hervez an oll galloud en doa evel pab, evit ho lakât da blega, ha da zistrei d'ho dever. Eskop Ravenn ne felle ket d'ezan anaout ar Pab da vestr e doare ebet: ar zant ne argilaz ket evit rei d'ezan eur gentel, hag hel lakât a reaz da anaout e tlie senti ouz an hini a ren, a berz Doue, an oll gristenien.

Ar zant-man a gendalc'haz, evel pab, da veza evel diagent tad ar beorien hag ar vinored, difennour an intanvezed: « Guell e kavan mervel paour-Job, » emezan, eget chom heb rei sikour d'an nep en deuz ezom. » — Ne gave ket e oa aoualc'h rei d'ezo arc'hant, soursial a rea outo e peb doare, hag ho hencha a rea hervez Doue. Met c'hoantât a rea, dreist peb tra, lakât

an devosion da greski e touez ar gristenien: pedi Doue, ober pinijen, kelen he dud: setu he labourou braz. Kemeret a rea soursi da lakât en oll eneoù eur feiz guirion ha skeduz, hag ho dougen da ren eur vuez kristen penn da benn. Ar gristenien, oc'h anaout vertuziou an Tad Santel, hag o velet pegement e labour e evit ho zilvidigez, a zouge doujanz ha karantez d'ezan: pedi a reant Doue da viret d'ezo eun Tad ker mad. Met Doue her galvaz buan davethan: mervel a reaz d'an 3 a viz gouere 683, dek miz hanter hebken goude ma oa bet hanvet Pab.

SONJOMP ERVAD :

Ar pab santel-man a zigemere gant eur garantez a dad ar bec'herien a zeue da anzañ ho fec'hed ha da c'houlenn pardoun; met kelen a rea hep aoun ar re a joume aheurtet goude ma oant bet kelennet. Eur mestr, eun tad hag eur vam, evit ober mad deveriou ho stad, a dle beza bepred leun a vadelez, gourdrouz a dleont ive evelato, ken aliez guech ha ma ra fall ar bugel pe ar mevel, evit he lakât da blega, ha d'en em viret diouz an drouk. Avechou zoken n'eo ket aoualc'h gourdrouz, red eo kastiza.

Tadou ha mammou, hag ober a rit-hu ho tever penn da benn?



AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EVEN

Sant Per, Abostol



Sant Per, prins an ebestel, vikel Jesus-Krist var an donar, a oa ginidik a Vetsaid, er Galile. Simon a oue he hano kenta, he vreur a oa Andre: bez' e oant ho daou, pesketerien var mor Jenezaret. Eun deiz Andre o veza bet ar c'hras da velet Jesus, a deuz da lavaret d'he vreur: « Ni hor beuz kavet ar C'hrist » hag ez ejont ho daou da gaout Jesus; Hen a lakeaz he zell da bara var Zimon hag a lavaraz: « C'houi eo Simon, mab Jonas. » hiviziken e viot hanvet Per. » An hano a « Ber » a ziniñ « mean » hag a verke e vije Per, meanfount an Iliz.

Eun devez all, Jesus a oa o tremen var ribl ar mor, e Betsaid, pa velaz Per hag Andre en ho bagou, o taoler ho rouejou da besketa, hag e lavaraz d'ezo: « Deuit » ganen hag e viot pesketourien tud. » An daou vreur

kerkent, o kuitât peb tra, a heullaz ar Mestr evit beza he ziskibien.

Eun deiz Jesus, o veza tost da Zezare, a c'houlennaz ouz he ziskibien: « Petra a lavar an dud divar va fenn? » Piou a zonj d'ezo oun-me? — « Lod a lavar, emezo, » oc'h Ian Vadezour savet euz a varo da veo, lod oc'h » ar prophet Eli, lod all a lavar eo c'houi ar profet » Jeremi distroet er bed-man, pe c'hoaz, unan pe unan » euz ar bropheted. » — « Met c'houi, eme Jesus, piou » a livirit-hu oun-me? — Per a respountaz raktal: « C'houi eo ar C'hrist, guir vab an Doue beo. » Ha » c'houi, Simon, eme Jesus, eüruz oc'h da anaout oun » guir vab Doue; ar sklerijen-ze oc'h euz bet, n'eo ket » gant skiant an den, met digant va Zad a zo en envou! » Rak-se e lavaran: « C'houi a zo Per, da lavaret eo, » mean, ha var ar mean-ze e tiazazin va Iliz: ha ne » vezo ket diskaret gant galloud an diaoul. Rei a rin » d'eoc'h alc'houeziou an envou: kement tra o pezo » liamet var an douar, a vezo liamet en env, hag ive » kement tra o pezo diliamet var an douar a vezo » diliamet en env. » Jesus a lavar dre ar c'homzouman, e lakea sant Per da vikel en he blas e penn an Iliz, da bastor var an oll gristenien.

Goude beza resevet ar gommunion zantel euz dourn Hor Zalver, d'ar Yaou Gamblid, gant an ebestel all, Per a nac'hañ he vestr, teir guech, e porz ar beleg bras. Jesus a reaz kerkent eur zell a dristidigez var he abostol, hag ar zant a lenvaz d'he bec'hed, da c'houde, betek he varo.

Goude ma oue savet Hor Zalver euz a varo da veo, e c'houlennaz teir guech digant sant Per: « Ha va c'harret a rit-hu? » An Abostol a respountaz: « Her gouzout a rit, Mestr, ho karet a ran. » Neuze, Jesus a lavaraz d'ezhan: « Renit va oaned, renit va danvadezed, » da lavaret, eo, bezit rener an oll gristenien var va lere'h.

Goude ma oue diskennet ar Spered-Santel var an Ebestel da zeiz ar Pantekost, Sant Per a brezegaz dioc'htu gant kement a nerz ma c'hounnezaz da Zoue e Jerusalem, tri mill den en taol kenta, ha pemp mill da

c'houde. Eun deiz o vont d'an Templ, e velaz eharz an or eur paour keaz, o ren he zaou-ugent vloaz, n'en devoa ket kerzet biskoaz: « En hano Jesus-Christ, eme » ar zant, savit en ho sav! » hag an den-ze a zavaz pare, hag a heuillaz d'an Templ an abostol santel, en eur renta gloar da Zoue. Sant Per a rea eleiz a viraklou, rakse e veze digaset an dud klanv var he hent, hag he skeud-hebken a rente d'ezo ar pare.

An Abostol santel a oue ar Pab kenta: ren a reaz an Iliz epad daou vloaz ha tregont benag, ha niver ar gristenien a greskas ker buan en he amzer, ma roaz an impalaer Neron urz d'ho lakât oll d'ar maro.

Sant Per a oue taolet er prizoun gant ar re genta; uzet en doa he vuez oc'h ober d'an dud anaout ha karet Jesus: koundaonet e oue da vervel var ar groaz. Ar zant a c'houennaz beza staget he benn d'an traon, rak ne verite ket, emezan, kaout eur maro henvel ouz hini he vestr. He verzerenti gloriuz a erruaz d'an 29 a viz even, er bloaz 67, var a greder.

SONJOMP ERVAD :

Setu aman eun den dister hervez an dud, eur pesketour dizesk hag a nac'haz he Vestr, lakeat gant Jesus da veandiazez an Iliz. Meur a gentel a gavomp e kement-se. Da genta, ar guir gristen a dle beza humbl, izel a galoun; ne dle morse kemeret lorc'h euz an donezounou a ro Doué d'ezan. D'an eil, n'euz ket eur pec'her, n'euz forz peger braz benag e ve he dorfet, ha ne c'hell kaout ar pardoun anezan, distrei da Zoue, ha dont da veza eur zant, pa 'z eo guir e velomp Sant Per, en despet d'he bec'hed braz, deut da veza santel-dreist, ha vikel Mab Doue.



AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ EVEN

Sant Paol, Abostol



D'ar bemp var 'n ugent a viz genver, ez euz bet hano euz ar burzud a reaz Hor Zalver Jesus evit gounit sant Paol d'ar feiz. Divar an devez-ze, ar zant a oue oll da

Zoué, bepred sentuz ouz he vouez, bepred aketuz da lakât da dalvezout he c'hrason, evit brasa santelez he ene ha silvidigez an dud. Hervez komz sant Jerom, sant Paol en deuz great he-unan muioc'h a labour evit an Aotrou Doue, eget n'o deuz great an oll ebestel all asamblez.

Diez e vefe lavaret an oll grasou kaer a roaz Doue d'an Abostol santel-man. Rei a reaz d'ezan eur skiant vras euz mysterion huel hor relijion; he zével a reaz betek ar baradoz: saouri a reaz neuze eun eürusdet dudiuz ha ne c'hell ket beza diskleriet var an douar.

Rentomp bennoz da Zoue da veza bet ker madelezuz e kenver sant Paol, meulomp ar zant da veza bet kement a c'hrason; meulomp-hen dreist oll da veza ho digemeret ervad.

Azalek an devez ma oue gounezet da Zoue betek deiz he varo, kaloun an abostol ne ehanaz da zevi gant tan eur garantez birvidik: « Na me a garfe, emezan, kuitât » va c'horf poumer, evit beza gant va Jezuz muia karet! » Skriva a reaz da gristenien Roum: « Piu » am distago euz karantez va Jezuz? Ar boan pe ar » glac'har, an naoun pe ar baourentez, ar gourdrou- » zou pe ar c'hleze? Nan, hel lavaret a ran heb aoun » ebet: nag ar maro, nag ar vuez-man, na galloud an » droug-sperejou, nag an amzer a vremen nag an am- » zer da zont, na netra all ebet na c'hello va distaga » euz karantez va Jezuz, mab Doue. » Kaloun sant Paol, evel a lavar sant Krysostom, a oa evel kaloun Jesus-Christ he-uman.

Meulomp c'hoaz sant Paol abalamour d'he garantez evit he nesa. Nag a vroiou en deuz treuzet, nag a boblou en deuz sklerijennet: ober a reaz meur a vech tro an Asi Izella; mont a reaz da Athen, da Gorint, d'ar Masedoan. Nag a boaniou a rankaz da c'houzanv, nag a anken a berz an dud! Teir guech he vag a reaz pense; aliez eo bet goall gaset, chadennet, taolet er prizoun evel eun torfetour, eur vech eo bet hanter lazet a daoliou mein, teir guech eo bet skourjezet, meur a vech ar Iuzevien, ar baianed koumnaret en he enep, a glaskaz

he lakât d'ar maro, hag e rankaz tee'het evit kaout he vuez. E kreiz he boaniou hag he labour ne oa nemet eun dra o rei kaloun d'ezan: ar zonzj e rente gloar da Zoue, en eur c'hounit d'ar feiz, eun niver braz a eneou.

Choum a reomp souezet pa zonzomp en deuz gellet eun den ober al labour en deuz great sant Paol, ha skignna kement hag hen, ar relijion gristen; met ar zant e leac'h tenna lore'h a gement-se, a oa ken humbl ma lavare: « N'e doum nemet an distera euz an ebestel, » n'oun ket din da reseo an hano a abostol, abalamour » m'em euz guechall great brezel d'an Iliz. »

Ar zant a gastize he gorf hep truez: « Gant aon, emezan, na c'hoarvezfe ganen beza daonet va-unan, goude beza prezeget d'ar re all. »

Erfin, an abostol braz-man a deuaz da Roum epad ma voall gase an impalaer Neron ar gristenien. Sant Per hag hen a oue koundaonet d'ar maro, hag en devez ma oue staget sant Per ouz ar groaz, sant Paol a oue dibennet. Var a gounter, he benn a reaz tri lamm en eur lavaret be vech hano santel Jesus: teir eienen a zinklaz eno kerkent; an teir eienen-ze a red c'hoaz hirio, hag ar re a ia da bardouna da Roum a ev euz ho dour gant devosion.

SONJOMP ERVAD :

Meulomp oll da viken madelez an Aotrou Doue, da veza roet kement a c'hrason da zant Paol; meulomp ive sant Paol da veza digemeret ervad ar grasou-ze, ha da veza ho lakeat da dalvezout evit gloar Doue ha brasa mad hor mam zantel an Iliz. Resevomp gant devosion, eveldan, ar grasou a skuill Doue varnomp, digoromp hor sperejou d'he sklerijen, hag hor c'halonou d'he garantez; neuze o veza santel hon-unan, ni hor bezo galloud da zantelât ive hor breudeur.



AR C'HENTA DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Goulc'hen, Eskop

En amzer ma tec'he eneziz Bro-Zaoz araok tud gouez, krenvôc'h egetho, ha mistri an enezen, tud eur vagik a oue kollet dioc'h ar re all, hag a iez da zouara, ho-unan, el leac'h m'ema brema bourk Goulven. Er vag e oa daou zen hebken, ozac'h ha greg, Glaodan ha Gologuen.

D'ar mare-ze, pevarzek kant vloaz benag a zo abaoue, koajou ha lanneier gouez a c'holoe eur c'halz euz bro Leon. An daou bried a gavaz tost d'an aod eun den hanter-c'houez en eul lochen savet dindan guez ar c'hoat; met an den a oue didruez en ho c'hever, n'ho repuaz ket. Glaodan a gavaz eur plas guaskedet: eno Gologuen a lakeaz er bed ar c'hrouadur a oue divezatoc'h sant Goulc'hen. Doue, dre druez ouz ar vam geaz, dare gant ar zec'hed, a lakeaz eun eienen da redet eno var beden Glaodan: ar feunteun a zo hanvet hirio c'hoaz, feunteun sant Goulc'hen.

Eun den euz ar vro, pinvidik ha dizher, en devoue truez ouz an divroidi geiz, hag a gemeraz soursi euz Goulc'hen: ober a reaz d'ezan mont d'ar skol. Ar paotr a zeskaz eaz ha buan; met pa oue savet, e leac'h mont da joum gant he vadoberour ha kaout he beadra, ez eaz da ren buez an ermited en eur c'hoat bian, demdost d'an aod. Eno e oue mad da iun, da bedi, da ober pinijen.

Eun devez m'oa deut, dre vor, paianed digernez er vro evit ober freuz ha skrab, laza ha laerez, komt Lesneven hanvet Even a roaz armou d'he dud evit mont d'an emgann oc'h an enebourien. Araok mont d'ar stourmad, ar c'homt a iez da gaout an ermit santel « Pedit evidomp, emezan, evit na vezimp ket trec'het

» gant ar baianed-se. — It heb aon, eme an ermit, ha » p'o pezo gounezet, deut d'am c'haout ama ». Ar c'homt a drec'haz an enebourien: pa zistroaz da gaout an ermit, e kavaz Goulc'hen er memez leac'h, he zivreac'h astennet e kroaz: pedi en doa great hed ar stourmad.

Kalz tud a c'houlenne digant ar zant en em rei da Zoue dindannan, neuze an ermit a c'houlennaz douar digant ar c'homt Even, hag a zavaz eur gouent vraz: an dud a ziredaz buan da c'houlenn digant Goulc'hen deski d'ezo skiant ar zent.

Vertuziou ar zant a oa ker skeduz, ma oue hanvet eskop, en despet d'ezan koulz lavaret. Diskouez a reaz d'he veleien ha d'he dud an oll skoueriou mad a gaver en eun eskop santel, mad e oue d'ho c'hentelia varzu ar baradoz, epad eun nebeut bloaveziou, met keuz en doa atao d'he ermitach, abalamour m'en doa bevet sioul ha didrouz ennan. Hag hen, eun devez, ha sevel ha mont en hent da guzat en eun ermitach doun-doun en eskopti Roazon. Eno eo e varvaz. Lod euz an historiou koz a lavar ez eaz da Roazon, n'eo ket evit tec'het euz ar garg a eskop eo, met evit brasa mad he eskopti. Mervel a reaz er gear-ze, goude beza resevet he zakramanchou diveza, var dro ar bloaz 616.

Kalz a viraklou a c'hoarvezaz var he vez: el leac'h m'en deuz bevet ar zant, ez euz breman eun iliz euz ar re vraoa.

SONJOMP ERVAD :

Ar zent o deuz karet ar vuez kuzet, a zo en em blijet o veva pell diouz trouz ar bed. Sant Goulc'hen a oue savet var ar gador a eskop en despet d'ezan, ha dioc'h ma lavar hiniennou, e tec'haz goude eun nebeut bloaveziou, abalamour ma kave re bounner he garg: aon en doa da goll he ene.

Pegen dishenvel eo tud ar bed! Ne garont tamm beva ho-unan, rak ne garont ket sonjal e Doue; redet a reont varlerc'h an ebatou, ar blijadur; en em blijout a reont e kreiz an trouz, abalamour ma teuont evelse da zonjal nebeutoc'h e stad fall ho ene, da glevet nebeutoc'h rebechou ho c'hous-tians.

Ha c'houi, petra garit-hu? Beva hoc'h-unan gant Doue, pe zonjal er bed hag en he falz plijadureziou?

AN EIL DEVEZ A VIZ GOUERE

Ar Verc'hez Vari ha Santez Elisabeth

Goude m'en devoue an arc'heal Gabriel diskleriet d'ar Verc'hez e vije mam da Jesus, Mab Doue en em c'hreat den, Mari a ieaz buan da velet he c'hiniterv Elisabeth, rak an eal en doa lavaret d'ezi: « Elisabeth » a dle, daoust m'eo koz dija, lakât eur mab er bed a » benn tri miz ama. » Mari a 'z eaz eta da zikour he c'hiniterv da drugarekât Doue.

Kerkent ha ma tigouezaz an Itroun-Varia e ti Elisabeth, houma, sklerijennet gant ar Spered-Santel, a lavaraz a vouez huel: « Benniget oc'h dreist an oll » gragez, ha benniget eo ar frouez a zougite. Euz a be » leac'h e teu d'in-me an honor hag an heur-vad-man, » ma plij gant Mam va Doue dont d'am guelet. A » veac'h em euz klevet ho mouez, m'en deuz va c'hroua- » dur merket he levenez. »

Mari, leun a c'hras, a respountaz en eur veuli Doue, hag he respount kaer, ar **Magnificat**, a vezo kanet gant an dud neñ an amzer hag an eternite: « Va ene a ro » gloar ha meuleudi da Zoue, ha va c'haloun a drid » gant ar joa o sonjal er pezh en deuz great em c'henver » va Doue ha va Zalver. Rak, pegen dister benag ma 'z » oun, eo plijet gantan sellet ouz he zervicherez, ha setu » hiviziken oll boblou an douar am galvo cüruz. Ia, an » hini a zo Oll-C'halloudeg hag Oll-Zantel en deuz great » em c'henver traou burzuduz. Evelse en deuz roet e » peb amzer merkou euz he drugarez d'ar re a veve en » he zoujans. Meur a vech en deuz diskouezet nerz he » vreaç'h, ha kaset da netra sonjou an dud ourgouilluz. » Diskaret en deuz divar ho zron ar re a oa braz ho gal- » loud, ha savet en deuz huel ar re n'o doa doare a netra.

» Karget en deuz a vadou ar re a oa o-tua gant an » naoun, ha lakeat en deuz var an noaz ar re o doa kalz » a zanvez. Kemeret en deuz erfin truez ouz Israel; he, » zervicher, hervez ar bromesa drugarezuz en doa great » guechall da Abraham ha d'he yugale a rum da rum. » An Itroun-Varia a jounnaz vardro tri miz e ti he c'hiniterv, ha da c'houde, e tistroaz d'he c'héar, da Nazareth.

Setu aze ar pezh a verk d'eomp an Aviel divar-benn ar gouel hirio. Ar gouel-man a dlefe beza great en deveziou diveza euz a viz meurs, met o veza ma tigouesfe peurliesia er c'horaiz, amzer a ganv hag a dristidigez, an Iliz n'her gra nemet e miz gouere. E broiou ar Zao-Heol, ar gouel a zo anavezet a bell goz; e broiou ar C'huz-Heol ne vez great nemet pemp kant vloaz a zo.

SONJOMP ERVAD :

Er gouel-man, ar Verc'hez Vari a ro d'eomp eur skouer a humilite hag a garantez. Eur skouer a humilite, rak hi, Mam Doue, ne oa ket dleet d'ezi ober eur veach hir evit mont da velet he c'hiniterv: ar giniterv-ze eo a dlie en em zirenka evit mont da velet Mam Doue. Ar Verc'hez Vari, humbl atao, a ia en hent: ar iaouanka eo, mont a ra da velet Elisabeth a oa kosoc'h eviti. Eur skouer a garantez eo ive, rak Mari a zo Jesus ganti, hag a veac'h eo en em gavet e ti he c'hiniterv, m'eo karget Elisabeth a c'hrasou, ha m'eo neteat sant Ian Vadezour euz ar pec'hed orijinel.

Ar Verc'hez ha santez Elisabeth a zo c'hoaz eur skouer evidomp er gouel kaer-man, abalamour na gomzont nemet euz a Zoue hag euz a draou santel. Pegen dishenvel int euz eur c'halz euz tud hon amzer, a ia heb ehan da velet ho c'herent, ho amezeien; met n'euz ganto nemet kaoziou goullou ha difoun. Bezomp santeloc'h hiviziken, pa 'z aimp da velet ar re all.



AN TREDE DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Paol, Eskop ha Merzer

Ar zant-man en deuz bet nerz-kaloun, pasianted, evel an Abostol sant Paol, rak-se en deuz kresket lufr an hano-ze.

Bez' en deuz bet kement da c'houzanv, m'en deuz gellet lavaret d'he dro, varlere'h an Abostol braz: « Nak a boaniou am euz bet da ziuaska, met Doue en » deuz va zikouret. » Bourrevet eo bet en eun doare didruez, kaset er meaz euz he eskopti, harluet betek peder guech.

Ar zant-man a oa ginidik euz a Dessalonik, ha desket kaer. Dont a reaz da Gonstantinopl: eno, abalamour d'he spered lem, d'he aked da zisplega guirioneziou ar relijion, ha da zifen ar feiz enep an heretiked, eskop Konstantinopl, araok mervel, hen dibabaz da veza eskop var he lere'h (340).

An heretiked, en ho c'hasouni enep ar zant, a glaske e kuz noazout d'ezan e peb giz. Tamall a rejont anezhan e gaou, dirak an impalaer, ha kement a c'hevier o doa livet divar he benn, ma oue barnet da vont en harlu, da lavaret eo, er meaz euz ar vro.

Ar zant, leun a fizians e Doue, a vevaz en harlu er brasa peoc'h; kel laouen e oa da c'houzanv evit Jesus-Christ, ma c'helle lavaret gant an Abostol sant Paol: « Tanva a ran eur joa dreist muzul e kreiz va foaniou. »

Goude maro an impalaer, ar zant a c'hellaz distrei d'he eskopti. An oll gristenien a ziskouezaz d'ezan ho joa o tont d'hen diambroug. Anaout mad a rea an teodou fall o doa great her c'has d'an harlu, goulskoude ne oue klevet biskoaz o lavaret an distera klem, nag oc'h ober ar biana rebech d'ezo: er c'hountrol eo, dis-

kouez a rea atao d'he enebourien dousder, pasianted ha karantez.

An impalaer nevez, hanvet Konstans, heretik aheurtet, n'hen lezaz ket pell e peoc'h. An eskop santel a oue ken tregaset, ma oue red d'ezan tec'het a nevez diouz ar vro. Neuze ee'h en em dennaz e Roum: ar Pab sant Jul a reaz d'ezan eno eun digemer euz ar re gaera, rak leun a istim e oa evit an eskop kalounek.

An Tad Santel ar Pab, var bouez poania kalz, a reaz d'an impalaer aotrea ar pastor karantezuz da zistrei a nevez etouez he zenved. Ne oue ket pell ma teuz Konstans, aliet gant an heretiked, d'hen tregasi adarre. Neuze ar zant a ieaz da Dessalonik, he vro.

Bloaz goude, ar prinz troidelluz, a lezaz sant Paol da zistrei d'he eskopti, met allaz! harluet e oue buan eur vech muioc'h. El leac'h ma oue kaset, an heretiked a gavaz an tu da ober d'ezan gouzanv eur verzerenti ker kalet, ma varvaz ar zant er bloaz 351, unnek vloaz heben goude m'oa bet lakeat e penn he eskopti.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz gouzanvet betek peder guech beza taolet er meaz euz he eskopti, ha hepred e veze laouen ha seder Sonjomp emamp en harlu var an douar-man, en eun draonien a zaelou. Sonjomp, ouspenn, n'ez aimp d'hor guir vro nemet dre hent ar groaz, hag e kavimp buan joa e kreiz ar poaniou a zigouez hemdez ganeomp.



AR PEVARE DEVEZ A VIZ GOUERE

An den Eürus Robert Arbrissel (1047-1117)

Ganet demdost da Roazon er bloaz 1047, Robert a oue savet e doujans Doue gant he dud: daoust ma oa paour ar re-man, e c'hellaz evelato mont da Baris da achui he studi; eno e oue resevet doktor.

Eskop Roazon o veza klevet hano euz he vouiziegezh hag euz he vuez a skouer vad, a reaz d'ezan distrei d'ar gear, hag he zikour da ren an eskopti. Robert a boaniaz, enebi a reaz ouz an dudhentil o doa c'hoant laerezh madou an ilizou hag ar c'houchou, ober a reaz d'ar veleien ren eur vuez santeloc'h.

Met Robert ne joumaz ket pell da zikour ren an eskopti. Eskop Roazon o veza deut da vervel, ar beleg santel a dec'haz euz ar vro evit mont da genta da rei kenteliou d'an dud a iliz e kear Anjers, ha da c'houde, da veva gant eur beleg devot en eun ermitach, e koat braz Kraon, en Anjou.

Ar piniennou a reaz eno a zo kalet: beva a rea gant eun nebeut griziu louzou, dougen a rea atao eur porpant reun, kouskat a rea var an douar noaz; hed an deiz, e pede Doue pe e prezege d'an dud divar dro a zeue d'he zelaou.

O veza ma teue kalz da c'houlouen beva asamblez gantan, ar zant a zavaz evito eun orator hag eur gouent, hag a roaz d'ezo eur reolen a vuez. Eun devez e oue red d'ezan mont da gear Anjers da brezeg dirak ar Pab a oa deut di, hag ar Pab sklerijennet gant Doue, a lavaraz da Robert: « Ho prezegennou a zougo kalz a frouez, it ha diskleriit lezen Doue d'ar bobl. » Robert a zentaz.

Dilezel a reaz he ziskibien hag he ermitach evit mont da brezeg dre ar vro, hag he genteliou a zougaz kement

a frouez, ma 'z eaz dizale eun niver braz a dud, ken goazed, ken merc'hed, d'he heul evit selaou he genteliou. Neuze, gant aon rak eun dizurs benag etouez kement all a dud ma vijent eat mesk ha mesk, Robert a zavaz meur a gouent evit ar merc'hed en eul leac'h hanvet Fontevraut, er Poitou, hag eur pennadik ac'hano, kouenchou all evit ar goazed. Ar beleg santel a lakeaz e penn an oll kouenchou, ken goazed, ken merc'hed, eul leanez devot braz ha leun a furnez; ober a reaz d'ezi ive sevel eun ti evit ar plac'hed a vrud fall o dije c'hoant ober pinijen, hag eun ti all evit ar merc'hed lor, a oa stank aouale'h d'ar mare-ze er vro.

Da c'houde, ar beleg santel a brezegaz an Aviel dre ar Frans a bez, en eur alia an dud da ober pinijen, hag en eur zavel kouenchou ama hag ahont, p'en devez tud aouale'h da vont enno.

Goude beza roet e peb leac'h skoueriou kaer ha kenteliou leun a furnez, ar zervieher braz-man da Zoue a gouezaz klanv, en eur gouent euz ar Berry, hag a c'houlennaz reseo he zakramanchou diveza.

Deiz he varo, an drouk-sperejou a zeuaz d'he denti met Robert, e leac'h spounta ouz ho guelet, a reaz sin ar groaz en eur lavaret: « It ac'halen, sperejou » milliget, n'oc'h euz netra da velet ama. » Kerkent an diaoulou a dec'haz, hag an abad santel, goude beza great eur beden ziveza d'he Zoue, a dremenaz er bloaz 1117, d'he zek vloaz ha tri ugent. Doue a reaz kalz miraklou var he vez.

SONJOMP ERVAD :

Ar zervieher santel-man da Zoue en deuz, dre humilite, lakeat eun abadez da zupiorez vraz var an Urz nevez en deuz savet, ha kement-se a zo bet kavet mad gant ar Pabed, pa 'z eo guir he Urz a zo bet aotreet. Nag a bed den, var an douar-man, a dlefe goulou eul lodennik euz humilite Robert Arbrisel, tud c'houezet gant an ourgouill, bugale ha ne fell ket d'ezo senti, mevellien ha ne fell ket d'ezo plega, paresioniz ha ne zelaouont ket ho beleien, kristenien ha ne fell ket d'ezo ober lavarou ho c'hovesour. E peb stad a vuez, an den a dle plega d'ar re a zo bet lakeat gant Doue d'he c'houarn.

AR PEMPED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Anton-Mari Zakari

(1502-1539)

Ar zant-man a oa ganet e Kremon, en Itali, er bloaz 1502, hag a oue devot evel eun eal en he vugaleach. Studia a reaz ar vedisinerez, met Doue a reaz d'ezan entent e oa galvet da gemeret soursi euz an eneou muioc'h eget euz ar c'horfou, hag Anton a resevaz an Ursion Sakr.

Ar beleg nevez, leshanvet dioc'htu **ealik Doue** gant he genvroiz, a boaniaz kalz da gatekiza ar vugale, d'ober d'ar re iaouank miret ar burete, d'ar re goz kaout pasianted, d'ar re glanv gouzanv ho foaniou heb klem, ha dizale e oue gullet muioc'h a garantez evit Doue o ren etouez an dud e kear.

Rannet he galoun o velet e choume evelato meur a hini kaledet er pec'hed, gounezet gant an techou fall, ar falz plijadureziou, an dizursiou, Anton ne baoueze da c'houlenn pardoun evito digant an Aotrou Doue. O veza great anaoudegez d'ar mare-ze, e Milan, gant daou veleg santel hag o doa c'hoant braz, eveldan, da c'hounit eneou da Zoue, ar beleg devot en em glevaz ganto, hag er bloaz 1530 e kemerjont ho zri an hano a **gloareged eus a Urs Sant Paol**.

Tadou an Urz nevez a rea katekiz d'ar vugale, a zeske d'ezo lavaret mad ho fedennou, a roe prezegennou d'ar bobl, a boanie e pep doare d'ober d'an dud beva hervez lezennou an Aviel. Reolen an Urz a oue aotreet gant ar Pabed; ar venec'h ousspenn ma poanient evel an oll veleien da sklerijenna an dud, a iea heb ehan d'an hospitaliou evit entent ouz ar re glanv, hag ho zikour da veva ha da vervel santelamant.

Er bloaz 1535, Anton a zavaz e kear Milan eur gouent merc'hed, hag a roaz d'ezo eur reolen a vuez henvel tost da vad ouz an hini a heuille he-unan. Prestik goude, ar zant a nevezaz an devosion e diou gouent leanezed euz Visanz; en unan euz ar c'houenchou-ze, e roet repu d'ar plac'hed kollet.

Devot braz d'ar Vere'hez gloriuz Vari ha d'Hor Zilver Jesus-Christ er Zakramant meulet ra vezo, ar zant ne skuize morse o pedi. Evit distrei an dud diouz an dizursiou a zo ker stank en amzer morlarjez, e reaz d'he venec'h ha d'he leanezed renta ar brasa henor da Jesus-Hosti epad 40 heur.

Niver ar venec'h a greske bemdez, hag ar c'houenchou savet betek neuze a oa deut da veza re vian gant an amzer; ar zant a glaskaz eta eul leac'h distro ha kuzet, evit ma vije eaz d'ezo pedi Doue a vir galoun goude beza bet eur pennad etouez an dud o prezeg hag o kentelia. Roet e oue d'ezan, er meaz euz kear Milan, douar eun iliz konsakret da zant Barnabaz, eno eo e savaz er gouent-veur euz he Urz, hag ac'hano eo e deut d'he relijiuzed an hano a Varnabited a vez roet d'ezo.

Dinerzet gant he labourou, Anton a oue skoet gant eun dersienn vraz, hag a varvaz e Kremon, d'ar 5 a viz gouere 1539, d'an oad a c'houec'h vloaz ha tregont.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, savet mad gant he dud a-vianik, devot evel eun eal en he iaouankiz, a zo choumet devot braz hed he vuez hag a zo deut da veza sant. Ar vugale a entent an traou kalz abretoc'h eget na zonjer, hag ar gerent a zo lezireg, re aliez siouaz! pa dlefent ober d'ezo anaout ha karet Doue abred.

Kaloun eun tad, eur vam a vez tenerreat er guechou kenta ma klevont ho c'hrouadur oc'h ober ho hano anezo, o tis-kouez en deuz eun tamik skiant hag anaoudegez; kaloun Doue, an Tad kenta, a vez tenerreat ive, pa vez great d'ar c'hrouadur he henvel da genta, he anaout, he garet abred; pa vez great d'ar c'hrouadur, dre ma kresk, he bedi seul guelloc'h m'en deuz muioc'hik a skiant. Hag hen ober a rit-hu, tadou ha mammou?

AR CHOUECHVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Goar, Beleg ha Ermit

Sant Goar a zo ganet en Akiteen, a dud a liguez huel. Ez-vianik e kare ar beden, hag en doa heuz ouz ar pec'hed; ar vertuz a blije ar muia d'ezan a oa ar burete. An dud iaouank euz he oad a c'hoapea anezan; met netra na c'hellaz he lakât dâ chench buez, da dec'het divar an hent mad en doa kemeret: netra na c'hellaz he lakât da drei kein d'ar beden.

Skouer vad he vuez a oa eur rebech evit he c'hoape-rien; a nebeut a nebeut e teuz da gaout varno kement a c'halloud, ma reaz d'eur c'halz anezo chench buez.

Mont a reaz da veleg, hag heb dale he eskop a gargaz anezan da brezeg an Aviel; hen ober a reaz gant kement a nerz, ma tenerea kalonou ar re oll her c'hleve: pec'h-erien, heretiked, paianed, den ebet na c'helle herzel outan.

Ar meulendiou a veze roet d'ezan, a bep tu, her spountaz. Kuitât a reaz he vro; klask a reaz eul leac'h distro, evit ren eur vuez kuzet, ankounac'heat gant an dud, hag en em rei oll d'ar beden. Mont a reaz eta en eun ermitach euz eskopti Trev. Eno e tremenaz eur pennad mad a amzer o pedi, o tiffraosta an douar, hag o kana meulendiou an Aotrou Doue. Paianed a oa c'hoaz er c'horn douar-ze: prezeg a reaz d'ezo an Aviel, ha gomit a reaz kalz anezo da sklerijen ar feiz.

Ar vrud euz he zantelez a zigasaz kalz tud d'he velet: lojeiz a roe da zarn anezo, dreist-oll d'ar re baour. Goude beza lavaret he ofis hag an oferen, lennet leor sakr ar psalmou penn da benn, e tremene he amzer o reseo gant madelez an dud estren a deue d'an ermitach. He-unan e purchase d'ezo da zibri, hag epad ar pred

e komze ganto euz traou santel; rei a rea da bep unan aliou deread evit he zilvidigez. Den na oufe niveri an dud en deuz lakeat var hent ar baradoz dre ar garantez birvidik-se, rak eur maread peorien a deue bemdez d'he ermitach.

En despet da-ze, an den santel ha karantezuz ne oue ket espernet gant ar goall-deodou. Tud fallakr a lavaraz ne glaske nemet koumpagnunez ar bed hag ar c'hundu vad; e oa Goar eul liver gevier hag eun den a skouer fall. Met Doue a ziskleriaz he zantelez dirak he enebou-rien dre c'hinou eur c'hrouadurik bian.

Ar roue Sijebert a oa d'ar mare-ze o choum e kear Metz. Brud santelez Goar a ieaz beteg ennan; kinnig a reaz d'ezan eskopti Trev; met ar zant ne oa ket e poan da ren eun eskopti. Goulen a reaz digant ar roue ugent devez da ober mad he zonz, hag he c'houlen a oue roet d'ezan. Distrei a reaz raktal d'he ermitach, ha neuze e pedaz Doue a zevri da zigas d'ezan eur c'hlenved hag a virfe na vije great eskop. Doue a zelaouaz he beden. Skoet e oue gant eur c'hlenved braz, hag a zalc'haz anezhan var he vele epad seiz vloaz.

Epad ar c'hlenved hir-ze, he garantez evit Doue a ieaz atao var gresk; ar guel anezan a oa eur gentel vad evit an dud, eur gentel a basianted hag a zousder dreist oll. Reseo a reaz he zakramanchou diveza gant eur feiz krenv ha birvidik, ha mervel a reaz d'ar 6 a viz gouere euz ar bloaz 575.

SONJOMP ERVAD :

Bez' ez eus tud ker fallakr, ma kemeront ar mad evit an drouk, ampoezouni a reont oberou guella an nesa; tamall a reont ar pez a dle beza muia meulet ennan. Eun den huc'ur a zonz d'ezan n'euz den pur var an douar; eun den fallakr a zonz d'ezan n'euz den ebet divlam. Poulzet gant an drouk-spered, an den a varn re vuan an nesa, hag a lamm digantan he vrud vad.

Sant Goar a zo bet dispennet ha goall vrudet evit an digemer vad a rea d'ar re a zeue d'he velet. Red eo kaout eur spered hag eur galoun griet gant ar fallagriez evit rebech da eun den eun dra hag a zo da veza meulet ennan. Greomp an holl vad a c'hellimp, heb ober van euz lavarou an dud.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ GOURE

Sent Syrill ha Method

Ganet e Thessalonik, er Gres, prestik goude ar bloaz 800, an daou vreur-man a oue kaset abred d'ar skol da Gonstantinopl, rak ho zud a oa pinvidik. Dizale e ouent etouez ar skolaerien desketa ha santela, rak mad e oant da boania e peb doare.

Pa oue achu ho studi ganto, Method a ieaz da vanac'h, rak e'hoant en doa da veva pell diouz trouz ar bed. Tud gouez euz an tu all d'ar C'hrimee o veza goulennet digant impalaerez Konstantinopl misionerien evit ho c'helen, an impalaerez a gasaz d'ezo Syrill, beleg dija, ha gouizieg dreist var oll skianchou ar relijion gristen.

Syrill a zeskaz iez pe langach ar baianed-se, a sklerijennaz anezo, hag ho greaz kristenien. Eur vech achu he labour eno, ar zant a zistroaz da Gonstantinopl, en eur zigas gantan relegou sant Klemant, pab ha merzer, (23 a viz du) kavet gantan var ribl ar Mor Du. Da e'houde, ar zant a gasaz beleien da ren ar gristenien nevez, hag a ieaz he-unan er memez kouent gant he vreur.

Roue ar Moravi o veza goulennet d'he dro misionerien digant impalaer Konstantinopl, heman a gasaz d'ezan an daou vreur, Syrill ha Method. Kentelia a rejont da genta tud ar Bulgari, rak dre ar vro-ze e oa red d'ezo tremen, met ar roue a rea skouarn vouzar da genta. O veza ma e'houlennaz digant ar visionerien ober d'ezan taolennou a bep seurt, lod koant, lod all spountuz, sant Method, mestr-liver, a verkaz d'ezan eun devez ar varn ziveza gant Hor Zalver e kreiz, an dud eüruz hag an dud daonet tu ha tu d'ezan.

Pa oue displeget an daolen-ze, ha diskleriet ar gui-

rioneziou a verke, ar roue, skoet he galoun, a lavaraz: « Kredi a ran en Doue a brezegit. » Peurjelennet e oue gant Syrill ha Method, ha badezet e oue da e'houde.

Neuze an daou vreur a ieaz d'ar Moravi; hed ar pevar bloaz hanter ma chomjont eno e rojont sklerijen d'ar bobl, e savjont ilizou; pa zistrojont da Gonstantinopl, ar vro oll a oa chenchet.

Sant Nikolas a oa neuze azezet var gador Sant Per; pedi a reaz an daou vreur da zont betek ennan. Senti a rejont laouen, digemeret e ouent gant ar brasa henor ha levenez. An daou zen santel a ziskleriaz d'ar Pab Adrian II, rak sant Nikolas a oa maro d'an ampoent, ar feiz a ziskoueze tud ar Bulgari hag ar Moravi, hag ar Pab a zakras anezo ho daou eskibien. Met Syrill, dinerzet gant al labour, a joumaz e Roum en eür gouent menec'h hag a varvaz eno, er bloaz 869.

Method a zistroaz etouez ar Slaved, er Bulgari hag er Moravi; o veza m'oa eskop, en doa muioc'h a e'halloud hag a e'hrasou. Mont a reaz en dro-man betek ar Bohem, hag e reaz da dud ar vro-ze dilezel an idolou ha reseo ar vadiziant. Ac'hano e skoaz larkoc'h, e sklerijennaz an Dalmasi, ar Pologn, ha meur a vro all, o rei e pep leac'h skoueriou kaer a zantelez.

Mervel a reaz vardro ar bloaz 885.

SONJOMP ERVAD :

Nag a boan o deuz kemeret an daou zant-man, evit sklerijenna kalz broiou divadez! Eat int, hep aoun, etouez tud gouez; ho e'henteliet o deuz. Hag ober a reomp-ni eun dra benag evit sklerijenna hon nesa, p'on deuz tro d'hen ober? Doue n'hor galv ket da vont da bell bro, met daoust hag aliou mad, kenteliou fur a roomp atao d'hon amezeien, d'hor c'herent, d'hor mignouned? Poaniomp da vont var vellât e kenver ar poent-se.

† † †

AN EIZVED DEVEZ A VIZ GOURE

Santez Elizabeth, Rouanez ar Portugal, Intanvez (1271-1336)

Elizabeth, merc'h roue Aragon, a zo ganet er bloaz 1271. Hanvet e oue Elizabeth evit delc'her sonj euz he moereb, santez Elizabeth a Hongrii, lakeat var an aoteriou, er bloaz 1235, gant ar Pab Gregor IX. Ar vere'h iaouank a dlie rei eur sked nevez d'an hano-ze.

En em drei a reaz a vianik varzu Doue; lavaret a rea bemdez, pa oue savet eun tamik, offis ar veleien; ober a rea eun heur orezoum a galoun; iun a rea bep sadorn ha dere'hent goueliou ar Vere'hez; beva a rea ken humbl, ker modest, ken die'hloar, ma oue brudet buan, ha goulennet da bried gant kalz a brinsed.

Dimezet e oue erfin da Zenis, roue ar Portugal. Met, evithi da veza rouanez, ne zilezaz netra nag euz he fedennou, nag euz he finijennou. Bemdez e save mintin-mad, ha goude beza great pedennou hir, ha lavaret he offis evel al leanezed, e kleva an oferen. Kommunia a rea ive aliez, hag araok kuitât an iliz e lavare ato offis ar Vere'hez hag offis an Anaoun. Dioc'h an abardaez ez ea c'hoaz da velet Hor Zalver er Zakramant meulet ra vezo. Iun a rea da viana teir guech er zizum: « Rak, » emezi, seulvui eo savet eun den huel er bed, seulvui » en deuz ezom da ober pinijen. »

He anzer a dremene er beden hag en oberou a drugarez: he-uman e serviche hag e louzaoue ar re glanv. Eun droiad edo o voale'hi he zreid da eur baourez keaz e doa eur gouli heuzuz en he gar. Evit tree'hi an donjer e doa ouz ar gouli-ze, ar zantez a stagaz he muzellou outan, ha kerkent, an hini glanv a bareaz.

An aluzennou a roe d'an dud paour hag ezomek a oa

dreist kount. Eun devez edo o vont da ingala etrezo eun tavancherad arc'hant, pa zigouezaz ar roue ganti. « Pe- » tra a zo ganeoc'h en ho tavancher, eme ar roue? » ... « Roz, eme ar zantez. » N'edo ket neuze mare ar roz; ma! pa zispakaz Elizabeth he zavancher, e teuz anezan bokedou roz euz ar re gaera.

Eun hevelep santelez a demmaz varni kounnar ha goarizi an drouk-spered. Tamallet e oue gant unan euz ofiserien ar roue da gaout re a garantez evit he floe'hik, eur paotr fur ha santel a gase aliez he aluzennou d'ar beorien mezuz. Ar roue a gredaz re vuan an teod fallakr ha milliget-se, lavaret a reaz, eun dervez, da boazerien eur fourn raz beo: « Taolit er fourn, varc'hoaz, kenta hini a deuo d'ho kaout euz va ferz. »

Antronoz vintin, ar roue a lavaraz d'he floe'hik: « Kea breman da gaout ar fournerien raz, ha goulenn digantho ha sentet o deuz ouzin. » Ar paotr iaouank a respountaz ia, hag a icaz kerkent en hent. Epad ma kerze, e klevaz kloc'h oferen hag e troaz en iliz dre zevosion, choum a reaz emhi keit ha ma padaz an oferennoù. Da c'houde, ez eaz d'ar fourn:

Etretant, ar roue, mall ganthan gouzout ha devet e oa bet he floe'hik, en doa kaset an ofiser fallakr da gaout ar fournerien: « Daoust ha sentet o peuz ouz ar roue? » a c'houlenmaz hen digantho. Ar re-man, e leac'h respount, a grogaz en den a deue da genta a berz ar roue, hag her strinkaz en tan, kaer en devoue en em zifen.

Ar floe'hik, digouezet da eil dirag ar fourn, na oue great drouk ebet d'ezhan, distrei a reaz dibistig d'ar gear. Ar roue, p'her guelaz, ha pa glevaz ar virionez penn da benn, a anavezaz e tifen Doue he yir zerviche-rien, hag a oue hiviziken leun a respet evit ar rouanez.

Goude maro ar roue, an intanvez santel-man a gemeraz sae Trede-Urz sant Fransez. Tremen a rea an darnvuia euz he anzer er beden: lavaret a rea e oa mam ar beorien, an intanvezed, an emzivadeg; an oll dud reuzendik a reseve diganti eun didorr en ho foaniou. Mervel a reaz e miz gouere euz ar bloaz 1336, ha Doue a ziskleriaz he zantelez dre eun niver braz a viraklou.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar rouanez-man var an trôn, n'oa ket aoualc'h d'ezi miret ar iunou merket gant an Iliz, iun a rea c'hoaz teir guech er zizun. Mar oc'h euz eur bloaz var 'n ugent achu, eo eun dever evidoc'h iun epad ar c'horaiz ha d'an deveziou all merket gant an Iliz. Ma ne c'hellit ket iun, goulennit kuzul, gant aoun da fazia, digant ho tad kovezour; hennez a verko d'eoc'h ar pez a dleot da ober hervez ho labour hag ho nerz.

II. — Eur mevel fallakr a damallaz eun all e gaou hag a varvaz en tan a oa bet c'hoezet evit eun den divlam. Lakit evez petra reot d'an nesa; an drouk a reot d'ar re all a gouezo varnoc'h hoc'h-unan, abred pe zivezad.

AN NAVED DEVEZ A VIZ GOUIERE

Sant Thibaut

(1017-1066)

Ganet e Provins var dro ar bloaz 1017, Thibaut a oue savet mad gant he dud.

D'he bemp pe c'houec'h vloaz, ar paotrik a oa ken devot, ken troet var ar pedi, ken diseblant e kenver c'hoariou all ar vugale, ma oa eaz anaout e vije gant an amzer eun den santel. Roet e oue d'ezan mistri gouizieg, brudet dre ho deskadurez, hag a nebeudou Thibaut a zeuaz da veza desket braz, met ne golle ket ar zonzj euz traou an env.

Pa oue achu he studi gantan, he dad a reaz d'ezan darempred ar bed eun nebeut; an den iaouank a zentaz, met n'en em blije tam etouez tud ar bed. Eun dudi e oa evitan lenn « Buez ar Zent », lenn dreist oll buez pinijennuz hiniennou anezo evel sant Ian Vadezour, sant Anton, sant Pakom hag an ermited all.

Eun devez e c'houlennaz digant he dad mont da veva

he-unan gant Doue en eul leac'h distro, met he dad a respountaz d'ezan: « Va mab, ho karet a ran, diez e » kavfen guelet ac'hanoc'h o pellât diouzin; choumit » ama, ha reizit ho puez evel ma plijo ganeoc'h. » Thibaut a joumaz, beva a reaz santeloc'h c'hoaz eget diagent, ne 'z eaz mui var dro tud ar bed, met kaer en doa pedi Doue, ne gave ket ar guir beoc'h, eur vouez a lavare d'ezan atao: « Kea da veva da unan. »

Senti a reaz ouz ar vouez-se, goude ma oue choumet daou vloaz benag er gear evit plijout d'he dad, hag ez eaz da ober he ermitach er Souab. A benn eun nebeut bloaveziou, ez eaz da bardouna da Zant-Jakez-Kompostell, hag ac'hano da Roum; chom a reaz tri bloaz leun d'ober ar pelerinachou-ze, rak beva a rea divar an aluzen; bale a rea diarc'hen ha diskabel evit ober pinijen.

Eun devez ma tremene demdost d'eur japel goz e kichen kear Visans en Itali, Doue a lakeaz e spered ar beachour e rafe mad chom eno da veva sioul ha didrouz. Tud ar vro a zikouraz ar zant da zevel he ermitach ha da rapari ar japel, ha Thibaut a boaniaz neuze d'ober pinijennou rustoc'h eget biskoaz. Dougen a rea noz-deiz eur gouriz reun en dro d'he gorf, ha beva a rea divar bara ha dour.

A benn pemp bloaz, eskop Visans o veza klevet hano euz an ermit santel a roaz d'ezan an Ursiou Sakr, ha neuze ar zant a nevezaz devosion ar c'harteriz, o lavaret santelamant an oferen, hag oc'h entana an eneou dre he brezegennou birvidik. Eun toulladik paotred iaouank a deuaz neuze da c'houlen beva dindan he c'houarn.

Ar vrud euz he zantelez o veza eat dre ar vro, ha betek er Frans zoken, tad ha mam ar zant a deuaz d'he velet, hag he vam a reaz sevel eun ermitach eviti demdost da hini he mab.

Daou vloaz araok he varo, Thibaut a oue skoet gant eur c'hlenved poaniuz hag a reaz d'ezan kaerât he gurumen er baradoz, rak he ziskibien a oa souezet o velet he basianted. Mervel a reaz e peoc'h, d'an devez

diveza a viz even euz ar bloaz 1066, goude beza resevet he zakramanchou gant eur garantez birvidik.

Kerkent ha ma oue tremenet, he gorf a zeuaz da viska eul liou kaer ha flamm; kalz burzudou a zigouezaz var he vez.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a dremenaz tri bloaz o vont da bardouna d'al leac'hiou santel, heb damant ebet d'ar skuisher, na d'an amzer gris. Eun dra gaer eo mont da bardouna, gant ma 'z aio eun den evit distrei d'ar gear guelloc'h ha santeloc'h. Nag a bed euz a dud iaouank hon amzer a 'z a d'ar pardouniou, evit klask ho flijadur, ha netra ken, evit redet an ebatou, evit gulet ar iaouankizou all, ha beza gulet ganto, hag a jour hed an devez heb tam devosion ebet. E leac'h distrei santeloc'h d'ar gear, e teuont avechou, siouaz d'ezo! gant pec'hejou pounner var ho c'houstians. Kemeromp skouer dioc'h sant Thibaut.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Ar seiz breur Merzer ha santez Felisite, ho mam

Felisite, itroun euz noblans Roum, a droaz kein d'ar bed goude maro he fried, evit en em rei oll d'ar beden. Gouzout a rea e oa he dever stris sevel he bugale e doujans hag e karantez an Aotrou Doue; rak-se ne espernaz netra evit rei d'ezo eun deskadurez kristen. Seiz mab iaouank e doa: Janvier, Felix, Philipp, Silvan, Alexandr, Vital ha Marsial. An aket e doa lakeat d'ho zevel a vianik hervez Doue, he c'henteliou hag he skoueriou mad a reaz anezo tud iaouank fur ha devot meurbet. Lavaret a rea d'ezo aliez ne deo nemet moged madou hag honoriou ar bed-man, displega a rea dirazo ar poaniou o deuz divoasket ar verzerien evit goumit eur gurunen gaer er baradoz. « Va bugale, emezi, me

» ve an eürusa euz ar mammou, m'ho kuelfen o skuill » ho koad dre garantez evit Jesus-Christ. » Bet e devoue he goulenn.

E guirionez, ar vuez santel a rene Felisite gant he bugale a startea ar gristenien en ho feiz, hag a lakea zoken kalz tud da drei kein d'an idolou. Ar c'helou-ze a ieaz betek an impalaer Antonin, setu ma reaz d'ar prefet Publius gervel dirazan an intanvez hag he bugale, evit ober d'ezho nac'h ar relijion gristen.

Ar barner a glaskaz da genta touella ar vam dre bro-mesaou kaer, ha dre c'hourdrouzou. « Aotrou, eme Felisite, va oll fizians a zo e Doue; esper am euz, gant ma vezin fidel, na vezin trec'het na gant ho promise-saou, na gant ho poaniou ». — Hag en eur zistrei ouz ouz he bugale, e komzaz outo evelhen: « Paotred, sellit » ouz an env; eno emma Jesus-Christ ouz ho kortoz, chou-mit fidel d'ar garantez oc'h euz evitan, ha bezit start » en ho feiz. »

Kounnaret, Publius a reaz d'eur zoudard, manegou houarn gantan, distaga meur a javedad gant Felisite. Goudeze, e c'halvaz ar vugale, hag e lavaraz da Janvier ar c'hosa: « Bezit furoc'h eget ho mam, anez, e vezo » red d'eoec'h gouzanv poaniou kriz. » — « Va mam a » zo fur, eme Janvier, hag eun den diskiant e vefen oc'h » adori an idolou; fizians am euz e vezin diouallet gant » Doue euz eun dra ken heuzuz. »

Felix, an eil, a respountaz d'he dro: « N'euz nemet » eun Doue, hag an Doue-ze hebken a dleomp da adori » euz a greiz hor c'haloun. Setu va c'hreden hag hini » va oll vreudeur; ho tourmanchou ne vezint morse » guest da vouga hor feiz na da vianât hor c'harantez » evit Jesus-Christ, Hor Zalver. »

Ar prefet, o kredi e teuje da viana abenn euz ar re iaouanka, a ieaz da gaout Vital ha Marsial. « Daoust » d'in da veza iaouankoc'h eget va breudeur, eme Vital, » n'em euz ket nebeutoc'h a nerz kaloun egeto, na » nebeutoc'h a garantez evit Hor Zalver. » Marsial, aoun d'ezan da veza espermet abalamour d'he oad, a lavaraz: « Kristen oun, ha kement a gas ha va breudeur

» am euz ouz hoc'h idolou; kristen oun, va lakit eta
» d'ar maro. »

Publius a oue mantret ha sebezet oll o klevet res-
ponchou ar seiz breur. O lakât a reaz dirak daoulagad
an impalaer, ha Felisite hag he zeiz krouadur a oue
koundaonet d'ar maro. Janvier, ar c'hosa, a oue skour-
jezet gant fouetou ploum ken na laoskaz he huanad di-
veza; Felix ha Philipp a oue flastret a daoliou baz; Sil-
van a oue beuzet en Tibr, hag an tri all, Alexandr, Vital
ha Marsial, a oue dibennet. Felisite, ho mam, a oue di-
bennet pevar miz goude, ha lavaret a c'heller e deuz
gouzanvet poaniou, tourmanchou he zeiz mab hag eo
bet eiz guech merzerez. Ho merzerenti a erruaz etro ar
bloaz eiz ugent (160) goude donedigez Hor Zalver.

SONJOMP ERVAD :

Nag eüruz eo ar vam e deuz roet da Zoue ken aliez a zant
hag a grouadur e deuz bet. Hounnez eo gloar Felisite. Hirio
c'hoaz kalz mamou o defe ar joa hag an henor-ze, ma kar-
fent beza mamou kristen evel ar zantez-man; ma karfent
deski abred d'ho bugale ober fae var traou ar bed ha trei
ho daoulagad varzu ar baradoz. Met siouaz ar mamou-
ze a zo rouez meurbed.

Eur c'halz euz tud hon amzer a zo o klem heb ehan euz
ho bugale: n'int mui ker sentus ha guechall, emezho. Piou
zo kaoz? Ar gerent meur a vech, abalamour na fell ket
d'ezho kemeret poan da gelen ar c'hrouadur a vianik. Daoust
hag ar vugale, pa c'hanont, n'int ket euz ar memez danvez
ha guechall?



AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ GOURE

Santez Pulkerii, Guerc'hez

(399-453)

Ar zantez-man, ganet er bloaz 399, ha merc'h d'an
impalaer Arcaad, e devoa a vianik eur spered lem hag
eur furnez dreist he oad. Ne doa nemed nao bloaz pa
varvaz he zad; en despet da-ze, ar re a oue karget da
c'houarn ar rouantelez da c'hortoz ma vije savet he
breur Theodoz, ne rejont biskoaz netra heb goulen kuzul
diganti. Ar peoc'h a rene er vro d'ar mare-ze; an oll a
anzave e oant dleourien euz a gement-se da vertuziou
ha da zantelez ar brinsez iaouank.

Beva a rea en he falez evel eul leanez en he c'houent.
Sevel a rea en noz da bedi Doue, ha boaz e oa ive da
gastiza he c'horf dre bep seurt pinijennou. D'an oad a
bevarzek vloaz e voestlaz he guere'hded da Zoue.

Pulkerii a oue eil-mam he c'hoarezed; poania a reaz
dreist-oll da gelen ervad he breur Theodoz. Heman,
deut da veza impalaer, a oue skouer ar rouaned kristen,
keit ha ma sentaz oue he c'hoar, ar peoc'h hag an urz
vad a renaz er rouantelez; biskoaz pobl ne oue eürusoc'h.

Tregont vloaz a oa abaoue m'en em skoazelle evelse
ar breur hag ar c'hoar evit kas ar rouantelez en dro, pa
deuaz teodou fall da drei kaloun Theodoz. Ober a reaz
d'he c'hoar mont kuit euz he balez, hag ar zantez a ieaz
dioc'htu er meaz euz a gear, evit beva he unan gant Doue.
Biskoaz n'en em glemmaz euz he breur digaloun; tre-
men a rea he oll amzer o pedi hag o vedita. An impalaer
en devoue hep dale dienez d'he c'hoar; peoc'h hag
eürusted ar rouantelez a oa eat da heul Pulkerii; neuze,
var goulen Theodoz, e tistroaz adarre d'ar palez. An
oll, braz ha bian, paour ha pinvidik, he resevas e

Konstantinopl, evel ho mam, met breur ha c'hoar ne jounjont mui pell assemblez. Theodoz a varvaz prest goude, ha Pulkerii a resevaz he gurunen. Neuze e timezaz d'eur jeneral, hanvet Marsian, goude beza en em glevet gantan da veva atao ho daou evel breur ha c'hoar.

Diou herezi nevez a zavaz d'ar mare-ze etouez ar gristenien; hini Nestorius hag hini Eutiches. Pulkerii ne chanaz ken na oue flastret ho fem d'an heresiou nevez-se. Dre he c'homzou, dre he skridou, dre he aliou hag he gourdrouzou e tiarbenne an heretiked, hag e startea ar gristenien er feiz.

Ar brinsez-mañ a reaz sevel eur maread ilizou hag hospitaliou evit ar re glanv. He c'harantez evit ar beorien a oa heb he far, ha ne devoue ken heritourien nemeto. Mervel a reaz leun a veritou d'ar c'henta devez a viz gouere euz ar bloaz 453, d'he fevar bloaz hag hanter kant.

SONJOMP ERVAD :

Pulkerii, goude beza rentet kalz servich d'he breur epad tregont vloaz, a oue kaset kuit gantan. Ar zantez ne n'em glemmaz ket; tec'het a reaz zoken gant joa euz ar palez. Met, var goulen an impalaer, e teuz adarre en dro, hag e sikouraz a nevez he breur evel diaraok.

Bezomp, ni ive, leun a garantez evit an nesa, ra vezo hor c'harantez guirion, diazezet var Doue. Greomp evit Doue an oll vad a reomp d'hon nesa, d'hor mignouned, d'hor c'herent; an oberou-ze a vezo merket gant Doue, ha digollet ganthan.



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Ian Gualbert, Abad

(993-1073)

Ar zant-man a zo ganet e Florans, en Itali. He dad, dijentil leun a spered, n'en devoue ken aked nemet da rei d'ezan eun deskadurez vraz hervez ar bed; ne boaniaz tamm da hada en he galoun karantez Jesus-Christ.

Ian a oa leun a lore'h, ha ne oa ket evit gouzanv an distera dismegans. Eur c'henderv d'ezan a lazaz he vreur Hugo, setu ma reaz Ian he zonzj da rei taol ar maro d'ar muntre. Deiz guener ar Groaz, ez eaz d'ober eur bale gant eun nebeut soudarded, hag e tigouezaz gantan muntre he vreur; an hent a oa ker stris ma ne c'helle hini anezo kemeret an teac'h.

Kerkent ha m'en deuz Ian Gualbert anavezet an enebour, e kemer he gleze evit treuzi d'ezan he galoun, hag e lavar gant eur vouez spountuz: « Muntre fallakr, » pep hini d'he dro, mervel a reoc'h! » Strafuillet oll, ar paour keaz den a zisken divar he vare'h, en em strink d'an daoulin, hag he zivreac'h e kroaz, e ra da Ian ar beden-man: « En hano Jesus-Christ maro evidomp hon » daou da genver an deiz-man, lezit va buez ganen. »

Ar c'homzou-ze a skoaz eun taol pounner e kaloun Ian. « En hano Jesus-Christ, emezan, n'oun ket evit » miret da rei deoc'h ar c'hras a c'houlennit en hano » Jesus-Christ; met, n'eo ket hebken laosker ho puez » ganeoc'h eo a fell d'in: c'hoant am euz ouspenn e » vemp mignouned hiviziken. » Ober a ra kerkent eul lam divar he vare'h, evit starda muntre he vreur var boul he galoun.

Da c'houde, Ian a ieaz da bedi d'eur japel ha ne oa ket pell ac'hano. Epad he beden, e velaz ar C'hris o

soubla he benn, evit he drugarekât da veza roet ar pardoun d'he enebour. Ar burzud-se a skoaz adarre he galoun, ha raktal e reaz he zonzj da drei kein d'ar bed, evit beza oll da Zoue.

Kemeret a reaz eta sae ar venec'h euz Urz Sant-Beneat e kouent Sant-Miniat; trouc'ha a reaz he-unan he bennad bleo hir. C'hoant a oue, prest goude, d'hel lakât da Abad; met Gualbert na felle ket d'ezan, hag en em dennaz en ermitach Kamaldoli. Ac'hano e teuaz da Vallombreuz; eno e savaz eur gouent nevez evit repui an dud a zirede a bep tu da zeski gantan skiant ar zent. Kaer en devoue argila, hanvet e oue da zuperior var ar relijiuzed nevez; rei a reaz d'he ziskibien reolen a vuez sant Beneat.

Ian Gualbert en devoue digant Doue an donezoun a viraklou; anaout a rea an traou muia kuzet e goeled ar galoun. Eun devez, eun den iaouank a c'houlenmaz beza digemeret en he Urz; resevet e oue. Met pa 'z eaz da goves, an den iaouank ne ziskleriaz ket piz he bec'hejou. Ar zant her galvaz da vont d'he gaout. « N'oc'h euz » ket great eur govesion vad, emezan; nac'het oc'h euz » ar pec'hed-man hag ar pec'hed-zont. » An den iaouank a joumaz mantret oc'h he glevet, ha red e oue d'ezan anzaou en doa great eur govesion sakrilach.

Ian Gualbert a varvaz leun a veritou e Pasignano, er bloaz 1073, pa oa gant he 80 vloaz.

SONJOMP ERVAD.:

Ar guella doare da denna varnomp bennoz an Aotrou Doue, eo poania d'en em drec'hi hon-unan. Eur gounid var an tech fall-ze a zo aoualc'h avechou, evit lakât eur pec'her braz da veza eur zant. Gualbert en doa kavet an tu da laza enebour touet he dud: he bardouni hag he vriata a ra dre garantez evit Jesus-Christ. Den dizoue, den a skouer fall betek neuze, Ian a zeuaz da veza eur c'hristen guirion ha birvidik.

« Pardounit, hag e viot pardounet; ma ne bardounit ket, » pardoun ebet evidoc'h. » Setu aze lezen Jesus-Christ. Krenit eta, tud leun a gasouni, ha chenchit buez.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Thurian pe Thivizio, Eskop

Thurian, hanvet ive Thurial ha Thivizio, a zo ganet en eskopti Roazon, demdost d'eur barrez hag a zoug he hano, Sant-Thurial.

He dud a oa bet pinvidik e Breiz-Veur, met tec'het e oant bet ac'hano evit dont da Vreiz-Izel; torret o doa en hor bro kgalz douar gouez, ha beva a reant eaz ha dizoursi en eur zével eur maread chatal. Ar paotrik a oue kaset aliez da ziuall ar zaout, met sonj en doa da lavaret kenavezo d'ar bed hag e c'houlenmaz digant he dud mont var ar studi d'eur gouent menez'h a oa tost d'he gear, e Baulon. He dud a asantaz laouen: tud a feiz e oant.

Thivizio a oa eur spered kaer a zen: deski a reaz buan oll skianchou ar bed, hag o veza m'en doa eur vouez euz ar re vrava, e poaniaz da anaout mad ar c'han.

Ar c'heskop Dol a zeue, bep er mare, da velet ar venec'h; klevet a reaz ar paotr o kana, hag he vouez a blijaz d'ezan kenan. Komz a reaz gantan, guelet a reaz en doa Thivizio skiant ha furnez evel m'en doa mouez, hag e reaz d'ar venec'h deski d'ezan kement tra a dle gouzout eun den a Iliz, e Baulon da genta, e Dol da c'houde.

An den iaouank a boaniaz, selaou a rea gant hast ar c'henteliou a roet d'ezan, hag heb dale e oue ker gouizieg hag he vistri: karget e oue da gelen ar re all d'he dro.

An eskop, dinerzet gant an oad, a lakeaz da genta Thivizio da ren menez'h Dol en he blas; divezatoc'h, e reaz d'ezan kemeret ar garg euz an eskopti. Ren a reaz

he dud gant aked, kelen a reaz he bobl, terri a reaz ar giziou fall.

Guelet a reer, pa lenner he vuez, pegement e plije da Zoue. Eun devez, da genver ar Rogasionou, epad ma rea eur brezegen en iliz, an env a zigoraz dirazan, hag e velaz Hor Zalver Jesus-Christ azezet var eun tron skeduz hag an elez o tougen an Arc'h a allians. An eskop santel a ziskleriaz dioc'htu kement-se d'ar re a oa oc'h he zelaou: « An Arc'h a allians, emezan, a verke » an unani a oa etre Doue ha pobl Israel: pa gendalc'he » ar Juzevien da zervicha mad Doue, o deze grasou » ha pinvidigez digantan; c'houi, emezan, poagnit da » zervicha Doue, hag hen a skuillo ive he vennoz » varnoc'h. »

Ma vele avechou ar baradoz digor, Thivizio ne ankounac'hea ket he zevel, ne zizonje ket traou an douar: difen a rea guir an dud a'oa didannan.

Eur c'homt hanvet Riouallon, devet gant ar c'hoant da gaout arc'hant, a zaillaz eun devez var eur gouent menez'h, hag a lakeaz an tan en ti, goude beza kaset kuit ar relijiuzed ha laeret an arc'hantiri sakr. An eskop a ieaz dioc'htu var he droad da gaout Riouallon, gant daouzek euz he venec'h. Nec'het o velet Thivizio, ar c'homt a c'houlenmaz: « Petra eo d'eoc'h dont keit all » var ho troad? — Den fallakr, eme ar zant, her gou- » zout a rit re vad. Perak oc'h euz devet unan euz va » c'houenchou? — Rapari a rin, eme Riouallon, sevel » a rin zoken seiz kouent all, ha renta a rin seiz guech » talvoudegez ar pezh am euz kemeret. »

Ar c'homt a zalc'haz d'he c'her, ha var gement-se an eskop a bardounaz d'ezan.

Goude beza renet an eskopti epad kalz bloaveziou, ar zant a ieaz da velet Doue d'ar baradoz. He gorf a oue enterret en iliz katedral Dol, met pa zeuaz an Normanted divadez da ober freuz dre ar vro, he relegou a oue kaset da Paris, var dro ar bloaz 878: abaoe ez euz bet eun devosion vraz da zant Thivizio, e Paris ha tro var dro.

SONJOMP ERVAD :

Sant Thivizio, daoust d'ezan da veza pinvidik aoualc'h, a zilezaz ar bed evit servicha Doue: he dud a roaz dioc'htu ho asant d'ezan.

Eüruz an tad hag ar vam, eüruz ar vugale a zent en doareze, pa 'z int galvet gant Doue. Nag a bed euz an tadou a vir ouz ho bugale da vont d'ar baradoz dre an hent eün: hent ar velegiach, hent ar venec'h; a ra d'ezo mont dre hent tröidelluz ar bed. Tud iaouank, mar doc'h galvet da lavaret kenavezo d'ar bed, heuillit mouez Doue; anez, e vezo diez braz d'eoc'h ober ho silvidigez. Ha c'houi, tadou ha mamou, dalc'hit sonj e vezo red d'eoc'h renta kount d'an Aotrou Doue euz ar vugale en deuz fiziet ennoc'h.

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Bonavantur, Doktor

(1221-1274)

Bonavantur, ganet en Itali er bloaz 1221, a gouezaz klanv braz pa ne oa c'hoaz nemet pevar bloaz. Sant Fransez, paour Assis, a veve neuze; mam Bonavantur a lavaraz da Zoue a dreuz he daelou: « Va Doue, dre » zikour meritou ho servicher braz Fransez Assis, save- » teit va c'hrouadur, hag e visko divezatoc'h sae he » Urz. » Ar paotrik a bareaz kerkent. Prest goude, sant Fransez en em gavaz da zont da velet tud Bonavantur, ha goude beza sellet mad ouz ar c'hrouadur, e tiskleriaz peger braz ha peger santel e tlie beza divezatoc'h; Doue a sklerijenne he spered.

Divar neuze, mam Bonavantur e devoue brasoc'h karantez eget ne doa araok evit he mab, bez' ez oa eun tenzor fiziet etre he daouarn gant an Aotrou Doue evit eun amzer hebken. Lakât a reaz he oll foan da gaerât atao ene he mab, evit ma rafe mad al labour m'oa galvet

d'ober. Deski a reaz d'ezan abred anaout an Doue en doa he grouet, en doa saveteat he vuez pa oa bet varnez mervel; deski a reaz d'ezan ober fae var ar bed, miret ar vertuziou kristen, ar feiz, an humilite, ar zentidigez. Ar paotrik a daole evez ouz komzou ha keutehou he vam, bez' en doa en he iaouankiz, karantez eun cal ha furnez eun den koz.

Deski a reaz er skoliou, kement tra a c'hellet anaout d'ar mare-ze, met mont a reaz abred d'ar gouent, hag eno e teskaz dreist oll karet Doue, hag he zervicha mad etouez menec'h santel.

Mont a reaz da Baris da achui he studi, rak eno e kavet neuze ar vistri gouizioka var an oll skianchou. D'he ugent vloaz, ar manac'h iaouank a oue karget d'ober skol d'ar re all, ker brudet e oa dija dre he spered lemm. Met seulvui e veze henoret gant ar re all, seul humploc'h e choume.

D'he bemp bloaz ha tregont, Bonavantur a oue hanvet superior huela he Urz; neuze he skoueriou kaer a humilite hag a garantez evit Jesus-Christ er Zakramant, a oue anavezet muioc'h e'hoaz gant he Vreudeur.

Araok beza beleget, ar zant ne grede ket tostât aliez aoualc'h ouz ar gommunion zantel, hag eun devez ma oa er japel o klevet an oferen, eul loden euz an hosti sakr a oa nijet euz a dre zaouarn ar beleg a oferenne, evit mont var deod, hag ac'hano disken e kaloun ar zant. Eur vech lakeat da rener braz he Urz, Bonavantur a reaz d'he Vreudeur tostât ouz an daol zantel alies a ma c'heljent.

Ma oa mad da bedi Hor Zalver er Zakramant, e oa koulz pe vell da zonzal e Pasion Jesus-Christ; na skuize ket o sellet ouz ar groaz. Lavaret a rea, en eur ziskouez he grusifi: « Setu al levr braz, ennan e kavan kement » tra a zeskan d'ar re all. »

Ar Pab Gregor X her greaz eskop ha kardinal en despet d'ezan, dre respet evit he zantelez hag he zeskadurez, rak ar zant en doa skrivet levriou euz ar re gaera.

Mervel a reaz e konsil Lyon d'ar 15 a viz gouere euz ar bloaz 1274, d'he dri bloaz hag hanter kant, goude beza renet he eskopti gant furnez ha santelez.

Ar Pab Syxt IV en deuz hen diskleriet sant, ar Pab Syxt V en deuz hen lakeat e renk Doktored an Iliz.

HINIENNOU EUZ KENTELIOU SANT BONAVENTUR :

I. — Red eo tec'het araok eun den kounnaret, evel ma tec'her araok eur c'hi klanv.

II. — An heor a vir n'ez afe al lestr da goll epad ar goall amzer; evelse an esperans a vir ouz ar c'hristen da rei he asant d'an dentasion.

III. — Ar guir gristen ne ra van evit beza meulet pe zisprijet gant an dud: Doue hebken a c'hell barn an den.

IV. — Soublomp da volontez Doue, choumomp humbl, hag ar peoc'h a reno en hon ene.

V. — An humilite e deuz peder bazen: var ar genta ema ar re a zisprij ar bed hag he lavarou; var an eil, ema ar re a ziouall na lavarfernt drouk ebet euz den; var an drede, ema an dud o deuz disprijans evito ho-unan; var ar bederved, ar re a zo laouen pa vezont disprijet.

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Herri, Impalaer

(972-1024)

Ganet er bloaz 972, er Bavière, Herri a oue kenteliet en he vugaleach hag en he iaouankiz gant an eskop sant Volfang; n'eo ket souez eta e vefe deut da veza habil, fur ha devot dre ma kreske en oad.

Herri a zimezaz d'eur plac'h iaouank a skouer vad hanvet Kunegond: an daou bried a vevaz atao evel breur ha c'har.

D'ar mare-ze, impalaer an Allemagn a veze choazet etouez an duked gant eun nebeudik kuzulierien hanvet prinsed ar rouantelez; da varo Othon III, ar brinsed a roaz ho mouez da Herri, duk ar Bavier: tronet e oue er bloaz 1002. Kerkent ha ma oue kurunet, an impalaer iaouank a boaniaz da lakât an urz, ar peoc'h hag al lealdet da ren e peb leac'h.

Rei a rea beindez kalz amzer d'ar beden; he vrasa plijadur a oa klevet an oferen. Evelato, ne laoske ket he gleze da vergla en he feur: en devez m'oa bet sakret impalaer, en doa touet var he le e tifenje an Iliz, ar beorien, an intanvezed; miret a reaz he c'her.

Eun arme tud paian o veza saillet var eur c'horn euz an Allemagn, a lazaz kalz a dud hag a ziskaraz meur a iliz, met kerkent ha ma klevaz hano euz an traou spountuz-se, an impalaer a zavaz eun arme, hag a redaz varzu an dud difeiz. Arme ar gristenien a oa kalz biannoc'h, met Herri a reaz d'he oll zoudarded kommunia araok mont d'an emgann, hag ar baianed a gollaz.

Ar prins devot a reaz sevel a nevez an ilizou diskaret gant ar baianed.

Prest goude, e oue red d'ezan mont da lakât ar peoc'h en Itali, rak ar brinsed a oa brezel etrezo, hag a rea kalz drouk er vro: treac'h e oue buan d'ar re a rea freuz.

Divezatoc'h ez eaz da Roum, evit terri galloud an dud o doa c'hoant miret ouz ar Pab Beneat VIII da ren an Iliz. Beneat VIII a lakeaz ar gurunen a roue var benn Herri, met an impalaer santel a gasaz dioc'htu ar gurunen-ze var aoter sant Per, evit merka en doa sonj difen atao guiriou an Iliz.

Neuze e tistroaz d'an Allemagn.

Tud divadez o veza gellet, eun nebeut bloaveziou divezatoc'h, ober freuz en Itali, an impalaer a redaz gant eun arme da zifen ar Pab, hag a ziskaraz oll enebourien ar feiz kristen er vro. Doue, evit he zigoll euz ar boan a gemere, a roaz d'ezan eur c'hras kaer. Eun nos-vez ma pede kalounek en iliz Itroun Varia an Ere'h, e velaz Hor Zalver Jesus-Christ, ar Vere'hez Vari hag

eur maread sent hag elez. Benzet el levenez, ar zant a oa er meaz anezan he-unan: bez' en doa eun tanva euz eürusdet ar baradoz.

Mervel a reaz er bloaz 1024, p'edo o ren he zaou vloaz hag hanter-kant.

SONJOMP ERVAD :

An impalaer-man a zo deut da veza eur zant braz en eur veva e kreiz trouz ar bed hag an henoriou. Miret en deuz oll zeveriou he stad, pedi a rea en iliz gant devosion eun eal, ren a rea he zujidi gant ar brasa lealdet, miret a rea ar peoc'h en eur ober brezel d'an dud fall.

Ped ha ped all a zo sent en iliz, hag a dro gant ar re fall kerkent ha m'emaint er meaz! Ne reomp ket eveldo, met heuilomp skouer sant Herri: bezomp devot e peb leac'h.



AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Gouel an Itroun-Varia-Garmez



Menez Karmel a zo unan euz ar c'haera menezioù a veler er Judee: sevel a ra he benn demdost d'ar mor Mediterranee.

Ar prophet Eli a reaz traou burzuduz var ar menez-se; eno eo e lakeaz, dre he bedennou, tan an env da goueza var ar sakrifis en doa kinniget da Zoue, hag e reaz lakât d'ar maro beleien ar falz doue Baal. Eno eo ec'h en em denne aliez, evit beva er beden hag er binijen, gant Elisee hag he ziskibien all.

Berthold, manac'h euz ar C'halabr, en Itali, a dreuzaz ar mor Mediterranee brema ez euz seiz pe eiz kant vloaz evit sevel eur gouent ha beva e traon menez Karmel, var urz ar prophet Eli he-unan. Tud iaouank, skuiz gant ar bed, a deuaz da veva gantan, hag ar Vere'hez benniget, laouen o velet ar vuez devot a renent, a reaz da zant Albert, eskop Jerusalem d'ar mare-ze, skriva eur roelen a vuez evit ar venec'h. Albert a zentaz; ar reolen a skrivas a oue kavet mad gant ar Pab Honorius III. er bloaz 1227; an Urz-se en deuz roet d'an Iliz sent braz: sant Ian ar Groaz, santez Thereza a Avila, santez Thereza ar Mabik Jesus ha kalz re all.

Gloar hag honor Urz menez Karmel pe Urz Karmez a zo ar Skapular, roet gant ar Vere'hez Vari da unan euz ar venec'h, Simon Stok, er bloaz 1251, e Kambriđj. En amzer-ze, ar Mahometaned divadez a oa bet treac'h d'ar gristenien e bro ar Judee, hag a voalgase ar re ne nac'hent ket ho feiz. Menec'h Karmez a oa tec'het, eur c'halz anezo, en Europ; eno, ar gristenien glouar a rea brezel d'ezo. Eun devez ma pede sant Simon Stock evit he Urz, ma c'houlenne digant ar Vere'hez merka he c'harantez evit Breudeur Urz Karmez, an Itroun Varia, kalz sent hag elez en dro d'ezi, en em ziskouezaz dirazan kaer ha skeduz: « Resevit, va mab ker, emezi, » guiskamant hoc'h Urz euz va dorn, evel eur merk euz » ar grasou dispar an euz bet digant Doue evidoc'h » hag evit oll bugale Garmez; eur merk a zilvidigez eo, » eur skoazel en trubuillou, eun herrez euz ar peoc'h » hag euz sikour an env betek fin ar bed. An hini a » varvo gant ar guiskamant-se varnan, a vezo diouallet » euz an tan a bado da viken. »

Divezatoc'h, ar Vere'hez en em ziskouezaz d'ar Pab Ian XXII, hag a roaz he ger e tenfe buan menec'h

Karnez euz tan ar purkator, dreist oll d'ar zadorn varlerc'h ho maro. Ar pab a embannaz ar bromesa-ze, hag a aotrez Urz Karnez. Ar gristenien o deuz guir da gaout perz e promesaou ar Verc'hez, gant ma vezo bet guisket d'ezo ar skapular kenta, skapular Karnez, gant eur beleg hag en deuz ar galloud-se, ha ma tougint anezan gant devosion. Aoualc'h eo mervel gant ar skapular douget gant devosion evit ma vefet diouallet diouz tan an infern, aoualc'h eo he zougen hed ar vuez, evit gellout goumit an induljansou kaer a zo en Urz. Ar skapular kenta hebken a dle beza guisket gant eur beleg. Ar skapular a zo merk guir zervicherien Mari, an hini a zoug ar skapular a zo evel pa lavarfe: « Me » a vevo e karantez Doue hag ar Verc'hez, chast em » buez, pasiant em foaniou. »

Ne dleer ket, var zigarez ma touger ar skapular, en em rei d'an dizursiou, red eo beva e guir gristen.

Evit beza tennet buan diouz tan ar purkator, evel m'eo bet diskleriet hueloc'h, ar c'hristen a dle dougen ar skapular; ouспен-ze, beva pur ha chast hervez he stad, ha lavaret bemdez ofis bian ar Verc'hez. Ar re na ouzont ket lenn, a dle ober an oll iuniou merket gant an Iliz, hag ober vijil atao da verc'her ha da zadorn.

SONJOMP ERVAD :

Pegen lezirek eo eur c'halz tud! Resevet o doa ar skapular pa oant var ho faskou etouez ar vugale, pe araok memez, douget o deuz anezan epad eun nebeut amzer gant respet ha devosion; pa zavont da veza braz, ne zougont mui skapular ebet. N'eo ket diez prena unan goulskoude. Tud laosk ha dizoursi! Ha mar teu d'ezo beza skoet gant eur maro trum, da he leac'h ez aint? Ar Verc'hez e deuz promettet baradoz d'an hini hebken a *varvo* gant ar skapular en dro d'ezan.

Eun nebeud bloaveziou a zo, ar gristenien a c'hell dougen eur vetalen e leac'h ar skapular. Evit kaout guir da skoazel ar Verc'hez, ar c'hristen a zo red d'ezhan, da genta: guiská ar skapular pa vezo resevet er Vreurie; d'an eil: goulenn bennoz ar beleg var he vetalen ken alies guech ha ma preno unan nevez.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Santez Kristina, Guerc'hez ha Merzerez

Choum a reomp souezet meurbet pa lennomp histor merzerenti ar zantez-man, e deuz d'an oad a zaouzek vloaz, pe var dro, gouzanvet, dre garantez evit Jesus-Christ, ar poaniou ar re grisa, var urz he zad.

Kristina a oa ginidik euz an Toskaan ha merc'h da c'honarner Tur, hanvet breman Bolsena. Heman a voall gase ar gristenien; roet en doa urz da gregi enno evit ho bourrevi en eun doare didruez. Ar verc'h a vele, koulz lavaret bemdez, digas meur a gristen dirak he zad evit anzaio ho feiz, ha ker goumezet e oue he c'halloun o klevet an traou kaer a lavarent, hag o velet ar joa, an nerz kaloun, ar vodersti a ziskouezent o vont d'ar maro, mar fellaz d'ezi beza kristenez d'he zro. Kaout a reaz, dre c'hras Doue, tud d'he c'helen var misteriou ar feiz, ha goude e resevaz ar vadiziant e kuz. Ar zantez na zaleaz ket, evelato, da rei da anaout e oa kristenez: bruzuna a reaz an oll idolou a veze adoret e ti he zud.

Pa velaz he zad an idolou torret, e tiskredaz varnezi; he gervel a eure dirazan: « Ha guir e ve, emezan, e » pefe great an drouk a damaller d'ec'h? » Kristina a respountaz: « Va zad ker, hag adori a c'heller doucou » ar seurt-se, n'o deuz na galloud na vertuz! » Ne oue ket lezet da lavaret hiroc'h. Mont a reaz eur goumar ker bras er gouarner, ma reaz skourjeza he verc'h gant eur grisder dinatur. Ar plac'hik a c'houzanvaz ar boanman heb laoskél eur glemmaden. Epad m'edor oc'h he bourrevi, e trugarekea an Aotrou Doue, abalamour d'ar c'hras a roe d'ezi da c'houzanv evit he c'hloar.

He zad ne gavaz ket e vije aoualc'h kement-se; rei a

reaz urz d'he c'has d'ar prizoum, ha lavaret a reaz d'ezi: « Chench pe mervel a ri. »

Ar vere'h a respountaz gant eun nerz kaloun dreist he oad: « Grit d'in, va zad, ar pezh a gerot; lemel a » c'hellit diganen va buez, met netra ne c'hello ober » d'in dilezel Jesus-Christ, va Zalver: hen a roio d'in » nerz da c'houzanv an oll boaniou. »

An tad dinatur a reaz neuze staga he vere'h ouz eur rod a droc azioe'h eun tan braz. Spontuz eo sonjal en eun hevelep iudazerez, met gant sikour gras Doue, an tan ne reaz drouk ebet d'ar zantez. Ar mirakl-man a reaz da galz paianed anaout guirionez ar relijion gristen. Ar gouarner avad, e leac'h digeri he zaoulagad da sklerijen ar feiz, a zeuaz da egari goasoc'h goas: lavaret a reaz staga eur mean pounner ouz gouzoug Kristina, hag he stleper en eul lemm zoun. Great e oue dioc'htu ar pezh a c'roulenne; met Doue, en doa diouallet he verzerz dioc'h nerz an tan, he diouallaz adarre diouz an dour: dont a reaz er meaz leun a vuez. He zad, o velet ne c'helle ket dont abenn anezi, a zeuaz da gounnari kement, ma oue kavet antronoz maro en he vele.

Dont a eure eur gouarner all da gear Bolsena: heman a oa ive eur paian hag eun den kriz. Goall gas a reaz dioc'htu ar gristenien, ha dreist oll Kristina, rak brud a oa anezi dre ar vro. Rei a reaz urz da liamma ar zantez ouz eur vezen, ha da leuskel tennou bir varnezi, ken na zeuje da vervel. Dre ar verzerenti-ze eo e rentaz ar zantez he ene d'he C'hrouer, hag ez eaz d'an env da reseo he c'hurunen, var dro ar bloaz 300.

SONJOMP ERVAD :

Iskiz eo klevet lavaret: « Eun tad eo en deuz lakeat bour- » revl he grouadur. » Kristina e deuz bet an tad-se, gou- » zanz e deuz great betek ar maro. « Eüruz, eme Jesus-Christ, » ar re a zo goall-gaset er bed-man abalamour d'ar pezh a » zo just, rag d'ezo eo rouantelez an env. » « Eüruz e viot, » emezan c'hoaz, pa viot goapeat gant an dud, p'o pezo da » c'houzanv euz ho ferz, pa viot tamallet ganto e faoz: » bezit dinec'h neuze, rak eun digoll kaer o peus da gaout » en envou. »

Netra na c'hell rei muioc'h a gonfort da zervicherien ha servicherezed Doue eget an enkreziou, ar poaniou o deuz da c'houzanv, ar goall vuez a reer d'ezo. Ho buez a zo henveloc'h evelse ouz hini Jesus-Christ, hag ho c'hurunen a vezo kaeroc'h er baradoz.

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ GOÛERE

Sant Kamill Lellis

(1550-1614)

Ganet e rouantelez Napl, Kamill a oue eur paotr dizuj er penn kenta euz he vuez: re droet e oa var ar c'hoariou. Mont a reaz da zoudard, ha prest goude, e savaz c'hoant gantan da veza manac'h, met ne oue ket resevet er gouent: re a vrud fall en doa.

E leac'h chench buez, an den iaouank a redaz d'an ebatou gant eun toullad pennou skanv, hag o veza ma kare ar c'hoariou braz, e tigouezaz d'ezan koll kement en doa, betek memes he gleze hag he zillad. Pa oue torret varnan tersien ar c'hoari, Kamill a joumaz goall nec'het: red e oue d'ezan asten he zourn evit kaout eun tam bara zeac'h da zebri.

Betek neuze, an den iaouank en doa lavaret meur a vech da Zoue: « Chench a rin »; met a benn eun nebeut deveziou, ee'h en em roe adarre d'ar bed; en dro-man e chenchaz da vad.

Mont a reaz da genta da zarbar ar vansounerien a zave eur gouent nevez: en doare-ze e c'houenze he vara dioc'h c'hoezen he dal. Doue, gant truez outan, he sklerijennaz, setu ma c'houlennaz beza resevet er gouent: ar venec'h, en dro-man, a zigoraz d'ezan ho dor; lakeat e oue e renk an **novised**. Eno an den iaouank a oue eur skouer evit ar venec'h all, met eur gouli en

doa en he c'har hag a reaz d'ar superior ober d'ezan mont kuit: « Ne c'hellomp ket ho reseo, emezan. »

Kamill a ieaz da Roum; eno, louzou ar vedisined a reaz d'ar gouli stanka, ha Kamill, laouen bras, a redaz da gaout sant Philipp Neri: « Tad, emezan, va gouli ne » zirent mui, breman e c'hellin mont da vanac'h. — » Ho kouli a zigoro adarre, eme ar zant, sklerijennet » gant Doue, hag e vezo red d'eoc'h mont kuit a nevez. »

Kamill, dieves ha dientent, a zistroaz d'ar gouent; digemeret e oue, met dizale, e oue red d'ezan mont kuit; he c'houli a oa digoret adarre. Bolontez Doue a oa ma teufe da zevel eun Urz nevez a venec'h: setu perak ne c'hellaz ket choum er gouent-se.

Kamill, distro da Roum, a ieaz d'an hospital evit klask ar iec'hed adarre, met en dro-man ec'h ententaz petra a c'houlenne Doue digantan. Mevellien an hospital, paet evit soursial ouz ar re glanv, a rea fall ho labour; ne garent ket en em zieza.

Kamill a glaskaz pevar pe bemp den a galoun, int-hi en em roaz da entent ouz ar re glanv dre garantez: ar zant ho c'hentelie en he gampr. Ar mevellien a glaskaz trabaz ouz an dud-se a golle ar vicher en eur ober mad ho labour, ha Kamill hag he vignoned a oue taolet er meaz euz an hospital.

Heb koll kaloun, an den iaouank a ieaz d'ar skol, d'he zaou vloaz ha tregont; deski a reaz en despet da c'hoaperez ar baotred a oa azezet en he gichen: beleget e oue. Neuze e savaz eun Urz nevez a venec'h hag a rea veu da veva er baourentez, er burete hag er zentidigez, hag ouspenn-ze, da entent ouz ar re glanv n'euz fors peger staguz e vefe ho c'hlenved. Reolen he Urz a oue aotreet gant ar Pab.

Er bloaz 1590, e oue eur gernez vraz en Itali; e Roum ha tro var dro a varvaz 60.000 den en eun nebeut miziou. Ar zant hag he venec'h a oue eun tenzor evit ar re glanv hag an dud ezomek, epad an deveziou truezuz-se.

Guelet a reaz he Urz o kreski, sevel a reaz kalz kouen-chou, met poania a reaz he-unan da entent ouz ar re

glanv betek en he glenved diveza. Pa oa dija varnez mervel, tud vad euz Roum a c'houlennaz mont d'he velet: « Nan, eme ar zant. Ne varver nemet eur vech, » ha dre-ze, eo red sonjal mad er zilvidigez en amzer » ziveza euz ar vuez. » Tremen a reaz er bloaz 1614, d'he 64 bloaz.

SONJOMP ERVAD :

Na varver nemet eur vech: peger guir eo kement-se! An dud a gas ho amzer o tastum danvez, o redet varlerc'h ar plijadureziou, o klask henoriou, dilezel a rankint ann oll draou-ze, mervel a raint.

Kamill, bet fall aoualc'h er penn kenta, en deuz chenchet buez hag echuet mad; mar doc'h bet fall eveldan betekhen perak na jenchit-hu ket eveldan? Mervel a reot.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Visant a Baol

(1576-1660)

Kaloun Doue a zo eur mor a garantez: ar c'haera skeuden euz ar galoun-ze a zo marteze kaloun sant Visant a Baol; hen a zo bet hanvet, er bloaz 1883, gant ar Pab Leon XIII, patron an oll dud vad a boagn da entent ouz ar paour.

Ganet demdost da gear Dax, d'ar 24 a viz ebrel euz ar bloaz 1576, Visant a Baol a oa paour he dud.

Ober a reaz aluzen a vianik: d'he zaouzek pe drizek vloaz en doa dastumet c'houec'h real, guennek ha guennek, gant kalz a boan; rei a reaz he denzor d'eur paour keaz, hanter-noaz, a c'houlenne an aluzen digantan.

Lakeat e oue er skol, ha deski a reaz mad ha buan,

met he dud a oa re baour evit ober d'ezan kas he studi da benn. Visant a reaz neuze skol da baotred pinvidik, iaouankoc'h evitan, epad ma kendalc'he da heuil studiou hueloc'h; evelse e teuz da veza desket. Beleget e oue, e Tarb, er bloaz 1600.

Er bloaz 1605, Visant a reaz eur veach dre vor, met paket e oue gant an Turked divadez, ha guerzet e Tunis. Rannet e oue he galoun pa velaz pegen truezuz e oa doare ar gristenien paket ha guerzet evel sklaved; hen a zervichaz mad he vistri, ha Doue a roaz d'ezan ar c'hras da douch kaloun he vestr, ha da dec'het gantan er Frans.

Hanvet e oue persoun e Klichy, tost da Paris, hag ober a reaz ar brasa mad er barrez-se, met red e oue d'ezan kuitat he barrez evit mont da joum e ti an Aotrou de Gondi, kenta mestr an oll galeourien a oa chadennet var listri roue Frans.

Karantez sant Visant a Baol evit he nesa a oa ker braz, ma ne velaz morse eun den er boan heb klask an tu d'he zizamma pe d'he zikour en eun doare benag.

Ar galeourien a oa dilezet d'ar mare-ze. Al listri brezel a gerze buan, pa c'hoeze an avel da gregi el lian; pa goeze an avel, an dorfetourien koundaonet d'ar galiou a veze great d'ezo rouenvat. Sant Visant a lakeaz beleien da entent outo evit rei d'ezo ho zakramanchou, hag a reaz sevel hospitaliou braz evit ho digemeret pa vezent klanv.

Ar roue a c'houlennaz alies aliou Visant evit ren ar Frans, hag ar zant a glaskaz atao gloar Doue, ha mad ar rouantelez.

An dud divar ar meaz o doa nebeut a zeskadurez, ne anavezent ket ho relijion: ar zant a zavaz eun Urz nevez a veleien hanvet Tadou ar Mission evit rei missionou d'an dud, ho sklerijenna, ho c'hovez, rei d'ezo peb eazamant evit bale difazi var hent ar baradoz.

Eur gernez vraz a rivinaz, en amzer sant Visant, al Lorreen, ar Champagn hag ar Pikardi, rak brezel a oa bet er broiou-ze. An den santel a c'houlennaz aluzennou an dud pinvidik, roet e oue d'ezan gant largentez, hag

e kasaz he veleien, beleien ar Mission, da ingala an aluzennou-ze etre an dud ezomek.

En amzer-ze, e veze aliez taolet ar vugale nevez ganet var ar ru, e Paris, hag er c'hearriou braz, pe lakeat var diri an tiez pinvidik: mervel a reant peurliesa. Ar zant a gemeraz truez ouz an cledigou-ze ne oant ket zoken badezet; rak ar vam e doa aoun da veza anavezet, hag a reaz d'eun nebeut merc'hed devot entent ouz ar vugale a gave. Gant an amzer, e savaz eun Urz nevez a leanezed hanvet Seurezed ar Charite; e pep hini euz ho c'houchou e oa eur plas kuz, hag eno peb den a c'helle kas eur c'hrouadur nevez ganet, heb beza na guelet na diskuillet. Ar bugel a veze badezet, maget, guisket ha savet.

En despet d'an oll henoriou a veze rentet d'ezan, Visant a joumaz humbl atao: ker mad e oa, ma lavaraz d'ezan eur vaouez divar ar meaz, eun devez: « Ne 'z » euz ha ne c'hell beza nemet eun Doue, met ma vije » bet daou, c'houi a vije bet an eil, Aotrou Visant. » Mervel a reaz, leun a veritou, e Paris, er bloaz 1660.

SONJOMP ERVAD :

Visant a Baol, savet paour, ne baouezaz da ziskouez he garantez evit an dud paour hed he vuez. Henoret eo bet gant ar brinsed hag ar rouaned, abalamour d'he humilite ha d'he garantez. He garantez evit an dud ezomek hag ar beorien a reaz d'ezan ober kement a draou burzuduz, ma 'z eo diez ho niveri. Karomp hon nesa, ni ive, hag on dezo sikour Doue, rak ar beorien a zo memprou Jesus-Christ.



AN UGENTVED DEVEZ A VIZ GOUERE

Sant Jerom Emilian

(1481-1537)

Jerom, ganet e Veniz er bloaz 1481, a dud pinvidik, a oue fur ha devot en he vugaleach: kelennet mad e oue gant he vistri.

D'he bemzek vloaz, an den iaouank a ieaz d'an arme, rak hiniennou euz he dud koz a oa bet tud a vrezel dispar. Etouez ar zoudardet, Jerom a ankounac'heaz a nebeudou kenteliou fur he vistri hag aliou mad he vam; mont a reaz da heul mignouned fall. Kerzet a rea dispount d'an emgann, ha dre-ze en devoue brud da veza eur zoudard mad, met sklabeza a rea he ene dre ar pec'hed, siouaz d'ezan!

D'he zeiz vloaz var 'n ugent e oue karget da zifenn eur gear enep soudardet an Aotrich, met en despet d'he nerz-kaloun, kear a oue kemeret, eur c'halz euz he zoudardet lazet, hag ar c'habiten iaouank karget a jadenou, ha taolet en eur prizoun tenval.

Piou a lavaro an oll zonzonou ankeniuz a ruillaz hag a ziruilaz dre spered Jerom? C'hoant en doa da veza brudet dre he nerz, he furnez, ha setu hen diskaret, e riskl da veza kaset d'ar maro. Diesa a gave a oa stad he ene: e stad a bec'hed marvel edo. Hag hen, savet gant eur vam gristen, gant mistri leun a feiz, a deuz da zonz d'ezan euz he Zoue en doa dilezet, en doa offanset! Neuze e reaz **veu**, mar gelte distrei beo d'ar gear, da vont var he droad ha divoutou da bardouna da japel Itroun Varia Trevis, ha da lakât eno oferennou ha pedennou.

A veac'h m'en deuz great veu, ma vel eur sklerijen gaer o para en he brizoun: ar Vere'hez en em ziskouez d'ezan, a dorr he ehadennou, hag a ra d'ezan tec'het kuit

caz ral. Leun a levenez hag a anaoudegez vad, Jerom a drugareka ar Vere'hez, miret a ra ar ger en doa roet d'ez, chench a ra buez a grenn.

Mistri Veniz o veza sinet ar peoc'h gant impalaer an Aotrich, ar c'habiten iaouank a oue great henor braz d'ezan, rak labouret mad en doa hed amzer ar brezel. Met hen ne oa mui e poan gant henoriou, choum a reaz eun nebeut bloaveziou er bed, met beva a reaz evel eun den hag a zo maro da oll draou an douar.

Goude eur gernez spountus hag a rivinaz an Itali er bloaz 1528, Jerom a oue devotoc'h c'hoaz. Sevel a reaz, gant sikour an dud vad, meur a grouadur hag a oa choumet minoret divar goust ar brezel.

Ar guir garantez na lavar morse: « Aoualé'h em euz » great. » Goude ar vinored, ar zant a zastumaz ar re goz, ar re a oa re glanv, re zinerzet evit gellout gounit ho bara. Sevel a reaz hospitaliou evito. Euz a Veniz, Jerom a ieaz da Badou ha da Veron da ober kement all, ha da c'houde, da veur a gear all c'hoaz.

Sevel a reaz ive, e Bergam, eun ti evit ar merc'hed a skouer fall, evit ho zikour da zavetei ho ene. Neuze, rannet he galoun o velet pegen dizesk e oa an dud divar ar meaz var guirioneziou ar relijion, ec'h en em roaz da brezeg d'ezo, n'eo ket en ilizou eo, met er parkeier, epad ma vezent var ho labour. Souezuz eo pegement a vad a reaz en doare-ze.

Ar zant, evit ma vije kendalc'het he oberou mad, goude he varo zoken, en em glevaz gant eun nebeudik tud devot, hag a zeuz da veza evelse foundatour eun Urz nevez hanvet Urz ar Somasked, abalamour ma oue savet ar gouent kenta e kear Somask.

Ar zant a oue superior kenta an Urz, sevel a reaz meur a gouent, met ar vosen o veza deut er vro, Jerom a 'z eaz da entent ouz an dud glanv, hag a oue skoet he-unan. Mervel a reaz er bloaz 1537, d'an oad a c'houec'h vloaz hag hanter-kant.

SONJOMP ERVAD :

Doue, en he vadelez, a ro avechou tro d'ar bec'herien da jench buez, goaz a-ze evito ma ne boaniont ket da zenti ouz

mouez Doue, ouz mouez ho c'houstians. An den a ra fae var grasou Doue a zeu he galoun da galedi; e riskl braz ema da vervel en he bec'hed.

Sant Jerom en deuz chenchet buez goude ma oa bet taollet er prizoun, eno en doa bet amzer da zonzal er maro; re all a jench da c'houde m'o deuz klevet eur gomz santel benag, pe goude ma 'z int bet klanv: chenchit, c'houi ive, mar demaoc'h e stad a bec'hed.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOURE

Sant Tenenan, Eskop

Sant Tenenan, hanvet ive Ternok, a zo ganet e Bro-Zaoz, hanvet Breiz Veur d'ar mare-ze. Kristenien ar vro-ze a oa breset neuze gant eur boblad tud gouez ha dizoue: ar re-man a laze an dud, hag a laere an traou hag an tiez, pa ne lakeant ket an tan enno. Eur maread kristenien a dec'haz euz an enezen evit savetei ho buez, hag a deuz en hor bro Arvorik: guech, famill ha famill; guech all, eur boblad tud asambles.

Ternok a dreuzas ar mor gant eun toullad re all, diblas a reaz divar ribl eur voazen-vor, e BreizVeur, evit douara e kichen Palud bras ar Forest Landerne. Eno, e koat ar Veuzit, a oa bet santeleat en he raok gant sant Konogan, e kavaz ar guasked hag ar goudor, evithan hag evit he dud.

Ternok, leveromp Tenenan mar kirit, a oa beleg pell a oa, etouez an dud a oa renet gantan e oa eur beleg all, Houardon, yaouankoc'h evithan; an daou zant en em zikouras evit terri an douarou gouez a gelc'he ar Beuzit. Pa oue diazezet mad ar bobladik kristenien hed ar ster Elorn, Ternok a zavaz en he vag, hag a yeaz da jom en tu all d'an dour, el leac'h m'ema brema skol gristen ar C'halvar, eur skol hag a zo bet savet emhi kement a vere'hed yaouank fur euz bro Leon.

Eno e c'helle beva he-unan gant Doue, e koat Talamon a roe goudor da veur a loen gouez en he gichen; eno, he dud a c'helle mont d'he glask, p'o deze ezom euz eun ali mad benag. O veza ma teuas ar gristenien da ouenna a nebeudou, var ribl ar ster Elorn, al lann-ze a oue roet d'ezhan hano ar zant, hag a oue great anezhan Lann-Ternok da genta, ha breman, Landerneau e galleg, Landerne e brezouneq.

Pa varvaz eskop Leon e Kastell, an dud a Iliz hag ar bobl a c'houennaz d'ho ren an ermit santel a oa ken brudet var ribl ster Elorn, hag en eskopti a bez. Ternok a enebaz da genta, met da c'houde, e soublaz da volonteaz an Aotrou Doue, hag e reaz d'he ziskibl, Houardon, dont gantan da Gastell, evit he zikour da ren an eskopti.

Ar zant a roaz d'an oll skoueriou kaer a vertuz, evelato, keuz en doa, avechou d'an ermitach en doa savet var ribl an Elorn. Mont a rea, bep er mare, da velet he genvroiz e Lann-Ternok, hag eno eo e varvaz, goude beza renet an eskopti epad eun nebeud bloaveziou. He gorf a oue lakeat en douar demdost d'he ermitach, hag eno, betek amzer an Dispac'h er bloaz 1793, ez euz bet atao eur japel en honor da zant Ternok.

SONJOMP ERVAD :

Nak a vad o deuz great ar venec'h en hor bro! An dud gouez, en oll broiou, na blij ket d'ezho labourat: pesketa ha chaseal a reont, ha netra ekn. An ermited, da genta, ar venec'h da c'houde, o deuz lavaret: « Al labour a zo bet santeleat gant Mab Doue p'eo deut var an douar, n'eo ket eun dishenor dispenn he roudou. Setu m'o deuz desket d'an dud labourat.

Breman, pa oar an dud ober d'an douar dougen frouez, ar venec'h hag al leanezed a ro ho foan hag ho buez da repui ar re goz n'int mui gwest da c'hounit ho bara, kentelia a reont ar re iaouank, mont a reont da brezeg ar feiz er broiou pell, entent a reont ouz ar re glanv en hospitaliou. Ar venec'h al leanezed a zo eur binvidigez evit ar broiou, hag eur vez eo e klasfet trabas outho.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOUERE

Santez Mari-Madalen

Madelez ha trugarez an Aotrou Doue a zo heb muzul. Digor e vez atao he galoun da zigemeret an den paour, n'euz fors peger braz pec'hejou en deuz great, divar an heur ma tiskouez keuz ha glac'har d'he vuez tremenet, ha bolontez da ober guelloc'h, en amzer da zont.

Mari-Madalen a oa ginnidik euz a Vethani, tri c'hart leo diouz kear Jerusalem. O veza kollet abred he zad hag he mam, ec'h en em roaz da heuil gizioù milliget ar bed. He breur, Lazar, hag he c'hoar, Martha, ho daou devot braz, ne ehanent d'he c'helen, met hi a skuizaz buan ouz ho c'hlevet, hag evit beva easoc'h, hervez he frouden direiz, ez eaz kuit diouto, hag e renaz eur vuez a skouer fall.

Goude beza choumet meur a vloaz er stad truezuz-se, ar bec'herez vraz a glevaz hano euz Hor Zalver Jesus-Christ, euz he brezegennou, hag euz he viraklou. « Mont a rin betek ennan, » emezhi.

Eun devez m'edo Jesus o leina e ti eur pharisian, he hano Simon, setu Mari-Madalen, ar bec'herez, o tont varzu ennan, hag heb ober van euz ar pezh a lavarfe an dud, setu hi, dirak an oll, o taoulina e-harz treid Hor Zalver, en eur skuill eur mor a zaelou. Jesus a ouie er vad petra a dremene neuze e spered hag e kaloun Mari-Madalen; gouzout a rea ne zaouline dirazan nemet gant keuz ha gant glac'har d'he fec'hejou, setu perak e lavaraz d'ezhi gant karantez: « It e peoc'h, ho pec'hejou » a zo pardounet d'eoc'h; ho feiz e deuz ho saveteat. »

Divar an devez-se, Mari-Madalen ne glaske nemet rei da Jesus merkou euz he respet, euz he c'harantez hag euz he anaoudegez vad. O veza ma oa deut, en dro,

da jom er memes ti gant Lazar, he breur, ha Martha, he c'hoar, he brasa plijadur a veze digemeret Jesus ha selaou he gentelioù mad. Mari-Madalen a heuillaz Hor Zalver, en amzer he Bassion; hen heuill a reaz zoken betek Menez Kalvar. Eno, edo etal ar groaz, ken a rentaz Hor Zalver he huanad diveza: eno edo c'hoaz, pa oue lakeat korf Jesus er bez.

D'ar zul-Fask, mintin mad, en he c'harantez evit Jesus, Mari-Madalen a iez gant eun nebeut merc'hed all d'al leac'h ma oa bet sebeliet ha lakeat ar c'horf sakr. Erruet eno, ar merc'hed santel a jomaz mantret. Ar bez a oa digor, ha ne oa mui ennan nemet al linsar a oa bet o liana korf Jesus.

Er meaz anezi he-unan, Mari-Madalen a redaz divar herr da gounta d'an Ebstel n'edo mui korf Hor Zalver ez bez. Lenva a reaz, hag hirvoudi, abalamour ma kave d'ezhi o doa soudardet ar Iuzevien laeret korf Jesus; da c'houde, e tistroaz varzu ar bez. Ha setu hi ha guelet dirazi eun den; kemeret a reaz anezan evit eur jardiner: « Oh! a lavaraz d'ezan Mari, mar d'eo c'houi eo o peuz » lammet euz ar bez korf va Mestr, lavarit d'in e pe » leac'h o peuz lakeat anezan, ma 'z in d'he gerc'hat. »

« Mari! » a lavaraz d'ezhi an den. Ker buan Mari-Madalen a anavezaz Jesus, he Jesus savet euz a varo da veo, d'an trede deiz, evel m'en doa diskleriet.

Mari-Madalen en em strinkaz gant joa da dreid Hor Zalver, en eur lavaret d'ezan: « O va Mestr! »

Pennou braz ar Iuzevien, ar re o doa lakeat Jesus d'ar maro, n'o devoa nemet kasouni ouz he yignoned, ouz ar re o doa bevet gantan hag a oa bet test euz he varzudou. Kasouni o doa dreist oll ouz Lazar hag he famill, abalamour ar guel euz a Lazar e buez a rea d'an oll sonjal en unan euz brasa burzudou Jesus.

Evit koll an test-se, ha koll he dud gantan, ar Iuzevien fallakr ho zaolaz ho zri, Lazar, Mari-Madalen ha Martha, en eur vag ha ne doa na stur, na goel, na rouenv ebet: Met e leac'h mont da goll, ar vag, renet gant elez Doue, a zouaraz e kichen Marseill, en hor bro Frans. Lazar a oue kenta eskop ar gear-man. Mari-Madalen en

em dennaz, pell diouz an dud, en eul leac'h distro, hag eno e tremenaz an nemorant euz he buez, o pedi Doue hag oc'h ober piniennou bras evit silvidigez tud Frans a oa c'hoaz paianed.

SONJOMP ERVAD :

M'hor beuz bet ar gualheur betek-hen da veva er pe-c'hed, evel Mari-Madalen, chenchomp buez evel di. Evit-se, evel Mari-Madalen, deomp da gaout ar beleg a zalc'h breman plas Jesus var an douar; evel di, daoulinomp ehars treid eur c'hovesour hag anzavomp, gant keuz ha gant glac'hars, hon oll bec'hejou. Neuze e kevimp ive ar beleg o lavaret d'eomp a-berz Hor Zalver Jesus-Christ: « Ho pe- » c'hejou a zo pardounet d'eoc'h, it e peoc'h. »

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOURE

Sant Apolliner, Eskop ha Merzer

Sant Apolliner, unan euz a ziskibien Hor Zalver, a ieaz gant sant Per da Antioch ha da Roum. Labourat a reas gant kement a nerz en diou gear-ze da c'hounit eneo da Zoue, ma oue choazet evit beza eskop, ha kaset goude-ze da brezeg an Aviel da Ravenn, eur gear lein a baianed.

Dre he brezegennou nerzuz, ar zant a lakeaz eno eur maread tud da anaout ar guir Doue. Beleien an idolou a ieaz eun drouk braz enno, hag a c'hourdrouzaz laza Apolliner a daoliou mein, met ne c'hel'jont ket dont a benn da viret ouz an eskop da brezeg ar guir feiz.

E Raveen e oa eun den mud, he hano Bonifas. En em erbedi a reaz da bedennou ar zant, hag Apolliner a roaz d'ezan ar prezeg en eur lavaret varnan hano santel Jesus-Christ. Eun niver braz a baianed a oue test euz

ar mirakl-man, hag a droaz kein d'an doueou faoz evit heuil ar guir relijion. Beleien an idolou a gounnaraz neuze muioc'h-mui, hag a reaz d'an eskop madelezuz kuitât kear.

Choum a reaz eur pennad amzer en eur c'havarn, hag eno e kendalc'haz da gelen ha da grenvât er feiz ar gristenien a zeue d'he gaout; badezi a reaz zoken eun niver braz a baianed. Goude-ze ez eaz da brezeg an Aviel larkoc'h, hag he labour a zougaz, eno ive, kalz a frouez.

Pedet gant kristenien Raveen da zistrei en ho zouez, ar zant a zentaz var an heur, hag a stagaz adarre d'al labour gant ar memez nerz-kaloun. Eun dijentil paian, he hano Rufin, a oa glac'haret oll gant he vere'h, klanv braz: pedi a reaz an den santel da zont d'he gullet. « Mont a rin, emezan, met roit d'in ho ker ne virot ket » ouz ho merc'h da heuil feiz Jesus-Christ, mar e deuz » ar pare digantan. — Va ger a roan d'eoc'h, emezan, » hag ouspenn, adori a rin an Doue a adorit ». Ar zant, goude beza great eur beden galounek, a lavaraz gant eur vouez krenv: « En hano Jesus-Christ, savit, va » merc'h, ha trugarekait Doue. » Er memez amzer, ar vere'h a zavaz hag a ziskleriaz gant eur vouez sklear ha freaz: « Ar guir Doue eo Doue ar gristenien. »

An tad hag ar vere'h, gant eun niver braz a dud all, a oue gounezet d'ar feiz dre ar mirakl-man. Prefet kear, eur paian aheurtet, o velet e oa disprizet he zoueou, a goundaonaz ar zant da veza kaset er meaz euz ar vro, goude beza great he vourrevi var eur starn-koat. Ar pastor santel, e leac'h dilezel he zerved, a joumaz etouez an dud a oa fiziet ennan, evit ho zikour hag ho c'hennerza: mall en doa da c'hounit kurunen ar verzerien.

An dud fall a reaz neuze kregi eman, hag he vourrevi gant kement a grisder ma kave d'ezo o doa lammet he vuez digantan. Ar gristenien o veza he gavet er stad truezuz-se, hag o velet e oa c'hoaz eur c'houezaden vuez er merzer kalounek, hen dougaz en eun ti. Eno ar zant ne ehane da lavaret d'ar gristenien kaout nerz-kaloun

ha chom bepred stard en ho feiz, en despet d'ar goall vuez a reat d'ezo. Mervel a eure var dro ar bloaz 78 goude ginivelez Hor Zalver.

SONJOMP ERVAD :

Sant Apolliner en deuz gouzanvet ar verzerenti epad an nao bloaz var 'n ugent m'eo bet eskop. Ar miraklou braz en deuz great a zo souezuz, met he nerz-kaloun e kreiz he boaniou a zo souezusoc'h c'hoaz. Eürusoc'h eo breman, o veza m'en deuz gouzanvet kalz poaniou dre garantez evit Jesus-Christ, eget da veza great kalz miraklou en he hano. N'eo ket ar miraklou en deuz great, met ar poaniou en deuz gouzanvet eo o deuz gounezet d'ezan he eürusted en env. Pa ro Doue d'he zent ar galloud d'ober miraklou, n'eo ket evit ho mad ho-unan eo, met evit mad ar re all, e leac'h ar poaniou a dalvez d'ar re ho gouzanv. Bezomp eta eun istim vraz evit ar poaniou, o veza ma 'z int eur merk suroc'h euz ar zantelez, eget ne deo ar miraklou memes.

Ar zant-man, n'euz bet distag ebet d'he boaniou epad an nao bloaz var 'n ugent m'eo bet eskop. Tud a zo, hag a c'houzanv ho foan epad eur pennad heb klem, met dont a reont gant an amzer da skuiza ha da goll kaloun. Petra benag m'o deuz great mad da genta, na vezint ket kurunet, ma na gendalc'hont ket.

Kendalc'homp-eta, ha goulennomp ar c'hras-se digant Doue.

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOUERE

Sant Kristoph, Merzer

Sant Kristoph a zo bet lakeat d'ar maro en amzer an impalaer Des, var dro ar bloaz 250, met abalamour m'eo bet savet ha m'en deus bevet e broiou ar baianed, na ouzer ket nemeur a dra divar benn he vuez.

Hervez lavarou an dud desket, Kristoph a zo ganet e bro Kanan, demdost d'ar Judee: he dud a oa paianed.

Bras ha nerzuz, an den iaouank a iez da zoudard, ober a reaz brezel d'ar Pers gant ar Romaned, en amzer an impalaer Gordian.

Eun devez, sklerijennet gant gras Doue ha gant ar skoueriou kaer a roe ar gristenien, e c'houlenmaz beza kenteliel var an Aviel, ha prest goude e resevaz ar vadiziant. Neuze, e leac'h choum soudard gant roue an douar, ez eaz da zoudard gant roue an env, hag e prezegaz an Aviel e bro al Lysie, var ribl ar mor Mediterrance. Gomit a reaz kalz tud da feiz Jesus-Christ.

Pa oue hanvet Des impalaer, kenta a reaz ar paian kriz-se a oue lakât ar gristenien d'ar maro. Gouarner al Lysie en doa klevet hano euz Kristoph pell a oa, hag a gasas soudarded d'he chadenna, ha d'he gere'het.

Epad ma rea ar zant hent gantho, ar zoudarded o devoue naoum du, rak an hent a oa hir, hag ar bevans, berr. Gant truez outho, ar zant a reaz d'ar bevans kreski en enn doare burzuduz; int-hi, slerijennet gant ar burzud-se, a droaz dioc'htu kein d'an idolon, evit adori Doue Kristoph.

E leac'h tee'het, ar zant a c'houlenmaz digant he c'hoardou kas anezhan dirak ar gouarner, rak mall en doa da reseo kurunen ar verzerien. Ar gouarner, kounnaret ouz Kristoph, a glaskaz he voureveli, met ar zant a oue diouallet gant Doue, ha n'en devoue drouk ebed. Astemet e oue var eur guele houarn, glaou beo dindaman, ha ne oue ket devet an distera; temmet e oue varnan gant birou, he ne oue ket tizet.

Eur maread paianed, o velet ar burzudou-ze, a c'houlenmaz ar vadiziant. Ar gouarner, drouk ennan muioc'h mui, a reaz dibenna ar zant.

E meur a iliz e veler patrom sant Kristoph, eur pennbaz teo gantan en he zourn, eur c'hrouadur var he ziouskoaz, o treuzi dour eur ster. Petra verk an daolenn-ze?

Kounta a reer, met na c'heller ket gouzout ha guir Pater eo kement-se, kounta a reer e oa sant Kristoph bras mantruz. P'en devoue troet kein da impalaer ar bed-man evit servicha impalaer an env, e kavaz var he

hent eun ermit, hag ar zant a c'houlennaz digantan: « Pe seurt am euz d'ober evit gounit ar baradoz ? — Yunit alies, eme an ermit. — Eur zoudard a zesk en em ganna, met na zesk ket yun, eme Gristoph. — Choumit pell da bedi neuze. — P'em euz lavaret va Fater mintin ha noz, e sonj d'in beza pedet aoualc'h, eme Gristoph adarre. — Neuze, eme an ermit, sellit ouz ar ster a zo ahont. Kalz tud a vez beuzet eno bep bloaz. C'houi a zo braz ha krenv, dougit an dud euz an eil tu d'egile dre garantez evit an Aotrou Doue. — Ar reolen a vuez-se a blij d'in, eme ar zant ».

Sevel a reaz eta eul lochen var ribl ar ster, hag e tougaz an dud o deze aoun o treuzi ar ster ho-unan. Eun devez, e klevaz mouez eur c'hrouadur o c'hervel diouz an tu all, met pa 'z eaz d'ar ster, na velaz den. Prestik goude, e oue galvet adarre, ha na velaz den ken nebeud.

Eun trede tro, e klevaz ar vouez, met er vech-man, e velaz eur c'hrouadur var ribl ar ster. E leac'h klem ha gourdrouz, ar zant a ziskennaz en dour var he bouezik, hag a zavaz ar bugel var he ziouskoaz. Ar bugel a oa skany da zougen.

Met p'en em gavaz ar zant e kreiz ar ster, ar c'hrouadur a deuz da veza pounner, ker pounner hag he bouez ploum, ar ster a c'houezaz hag a venne beuzi Kristoph hag ar c'hrouadur. Harpet var he vaz krenv, ar zant na fallgalounaz ket, treuzi a c'hellaz; met en eur zisken ar c'hrouadur var ar ribl, e lavaraz d'ezhan: « Na te a zo pounner, va mab. Kaout a rea d'in em oa ar bed oll da zougen ». Ar bugel a respountaz: « Guir eo, Kristoph, douget e peuz ar bed, ha memez krouer ar bed. Pa vezi e kichen da lochen, sank da vaz en douar, hag a benn vare'hoaz, ar vaz-se a vezo eur vezen euz ar re gaera ». Hag ar c'hrouadur na oue mui guelet.

Kristoph a zankaz he vaz en douar, e kichen he lochen: abenn antronoz, ar vaz a oa deut da veza eur vezen balmez, frouez kaer enni.

Setu aze ar pezh a zo bet diskleriet guechall, met an dud desket na voarantont ket e ve guir penn da benn.

SONJOMP ERVAD :

An devosionou a zo dioc'h doare eun den, n'int ket atao mad d'an oll. Bez' ez euz tud hag a zo mall gantho lakât ho hano en oll Breurieziou ma klevont menek anezho. Pa viot eat en eur Vreurie, grit mad ar pezh a zo gourc'hemennet er Vreurie-se, met arabat eo d'eoc'h mont enno oll. Goulennit, da genta, ali digant ho kovesour. Sant Kristoph en deuz gounezet eur gurunen gaer er baradoz, oc'h ober vad d'an dud, en he zoare, heb choum pell da bedi, nak ober yuniou kalet.



AR PEMPEDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOUERE

Sant Jakes, Abostol



Daou zant Jakes a zo etouez an Ebestel. D'an devez kenta a viz mae, hor beuz great gouel unan anezo, hag a oa mab Alphee ha Mari Gleophas ; an hini a reomp he c'houel hirio, a zo mab Zebedee ha Mari Salome, ha

breur sant Ian, abostol eveldan. Bez' e oant kar tost d'Hor Zalver.

Kerkent ha m'en em lakeaz Jesus da brezeg dre vro ar Judee, ar zant-man a oue unan euz ar re aketusa da vont d'he zelaou, ha da viret mad he lezen.

Eun devez ma tremene abiou lenn-vor Jenezareth, Jesus a velaz Jakes ha Ian, he vreur, o tresa ho rouejou en ho bag. Ho gervel a reaz da vont d'he heul. Ker buan Jakes ha Ian a zentaz: kuitât a rejont dioc'htu ho rouejou, ho bag hag ho zud, evit mont gant Hor Zalver.

Sant Jakes hag he vreur a zo bet, gant sant Per, an tri abostol karet ar muia gant Jesus. Hor Zalver a gare Jakes ha Ian dreist ar re all, abalamour m'oant bet atao pur ha chast, karet a rea ive sant Per, abalamour d'he galoun vad ha d'he feiz krenv.

An tri abostol-man a zo bet, kouls lavaret, test euz kement mirakl en deuz great Jesus. Gantan e oant var menez Thabor, pa ziskouezaz eno lod euz ar c'hloar en devije divezatoc'h, er baradoz, he gorf divin. Jesus ho c'hemeraz c'hoaz ho zri, evit dele'her koumpagnunez d'ezan-en he angouni, pa oa er Jardin Olived, dere'hent he varo.

O c'houzout ar garantez dispar en doa Jesus evit he daou vab, Jakes ha Ian, Salome, ho mam, a lavaraz eun dro da Jesus: « Mestr, grit ma vezo an daou-man, unan » a bep tu d'eoc'h, en ho rouantelez. » — « Ia, Mestr, a » lavaraz ive d'ho zro, an daou abostol, grit ma vezimp » azezet, en ho kloar, unan ac'hanoump a zeou hag » egile a gleiz d'eoc'h ».

O veza klevet kement-se, an ebestel all a gemeraz, var an taol, eun tam drouk ouz Jakes ha Ian.

Evit ho difazia oll, Jesus a roaz d'ezo da entent ar pez a dlient da ober evit beza er plasou kenta, er baradoz. « An nep en deuz c'hoant da veza divezatoc'h ar » c'henta, eme Jesus, a dle, er bed-man, en em zele'her » er renk izela ».

Gant an dra-ze, Jesus a zigasaz d'ezo da zonj e rank-jent gouzanv eveldan poaniou a bep seurt, er bed-man, araok mont da eürusted ar baradoz.

Goude ar Pentekost, p'en devoue resevet ar Spered-Santel er memez amzer gant an ebestel all, sant Jakes a ieaz da gas sklerijen ar feiz da rouantelez Spagn. Da c'houde e tistroaz da Jerusalem, hag eno ive ne espernaz netra evit gounit eneo da Jesus-Christ.

O klevet he brezegennou, pennou braz kear a egare; rak kalet e kavent beza tamallet gantan da veza skuillet goad Jesus, mab Doue. Setu int-hi eta o tiskuill sant Jakes d'ar roue Herodes-Agrippa, hag o c'houlenn ma vije kaset d'ar maro.

Ar roue Herodes, evit ober plijadur d'ezo, a goundaoz an abostol santel da veza dibennet. He verzerenti a erruaz, er bloaz 62 goude ginivelez Hor Zalver.

Korf sant Jakes a oue enterret e kear Jerusalem. Divezatoc'h, kristenien ar Spagn, dre anaoudegez yad, abalamour m'en doa digaset, ar c'henta, sklerijen ar feiz en ho bro, a c'houlennaz he relegou. E tro ar bloaz 810 eta, e oue douget da gear Kompostell ar pezh a joume euz he gorf presiuz.

Abaoue an amzer-ze e tired bep bloaz kalz pardounerien da henori ar zant eno : hag an dud a oa, guehall, guelloc'h c'hoaz eget hirio da vont da bardouna. Abalamour ma veze kavet, var dro Kompostell, kregin kaer hag a veze staget gant ar bardounerien ouz ho zok pe ho mantel, ar c'hregin-ze a zo bet hanvet kregin sant Jakes. Hon tud koz a rea Bali sant Jakes euz eur maread stered hag a zo hanvet e galleg « la Voie Lactée. »

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a oa unan euz ebestel muia-karet Jesus: bep seurt merkou a garantez en deuz resevet digant Hor Zalver. Evelato pa c'houlennaz digantan unan euz ar plasou kenta, en he gichen, en he rouantelez, Jesus a respountaz d'ezan e rankje, evit-se, beza humbl ha tremen dre galz a boaniou.

Ni ive, mar fell d'eomp mont d'ar baradoz, bezomp humbl. Gouzanvomp, heb klem, oll poaniou ar vuez-man-ha dreist-oll, ar poaniou, ar brezel a ra d'eomp marteze an dud digristen, abalamour d'hor feiz, abalamour d'hor relijion.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOURE

Santez Anna, Mam ar Verc'hez Vari



Piou a c'helfe lavaret, en draonien-man a zaelou, pegen eüruz eo an Itroun Santez Anna er baradoz ? peger skeduz eo he gloar ? Hi a zo mam d'ar Verc'hez, mam goz d'Hor Zalver Jesus-Christ : eun implij mad e deus great atao, a lavar d'eomp ar zent, euz ar grasou kaer e deuz resevet digant Doue.

Anna a oa euz a lignez ar beleg braz Aaron, ha brudet dre he gened, met muioc'h c'hoaz dre he zantelez etouez bugale Israel. Beva a reaz humbl ha modest, ha kemetret a reaz evit pried Joachim, euz a lignez ar roue David, brudet ive dre he furnez hag he zevosion. Doue, evit kreski mirit an daou bried santel, a reaz d'ezo choum disher epad ugent vloaz; kement-se a oa eun dishenor braz evit tud Israel.

Goulskoude an daou bried ne chanent da bedi, ha da c'houlouen ma teufe an Hini m'oa an dud var c'hed anezan, abaoue keit all a amzer: ar Mesiaz. Pedennou ha vertuziou Joachim hag Anna a reaz d'ezho kaout eun henor dispar; gueleit a rejont en ho zi ar Vere'hez beniget, an hini a dlie beza mam ar Mesiaz hag a zo ho mere'h d'ezho.

Ar Vere'hez Vari, evel ma kan an Iliz d'an 8 a viz kerza, a zo bet konsevet ha ganet Dinan, peger kaer gras! Met m'e deuz bet ar Vere'hez, kerkent ha m'euz bet anezi, an oll grasou a c'helle da reseo en he stad, kaeroc'h grasou eget ar zent brasa d'an deiz diveza euz ho buez, Santez Anna a dlie beza resevet, hi ive, eul loden benag euz ar grasou a zo bet roet d'he mere'h. M'e deuz ranket Anna beza ar zantela euz ar priedjou, evit beza choazet gant Doue da vam d'an Itroum Varia pegement e tle beza kresket he zantelez o veva gant Mari. Ia, Anna eo e deuz maget ar Vere'hez, e deuz ententet outi, diouallet anezi euz a bep drouk, Anna e deuz komzet d'ar Vere'hez euz a Zoue, euz an humilite, euz ar volesti, sikouret e deuz ar Vere'hez da vont bemdez var sellat, var zantellat. Piou a lavaro ar meritou e deuz goumezet?

P'e devoue ar Vere'hez tri bloaz, e oue kaset d'an templ, dioc'h ma lavar Tadou an Iliz. Piou a gasaz anezi? Piou a ginnigaz ar Vere'hez benniget da Zoue? Piou nemet he mam! Biskoaz karantez, nemet hini Jesus ha Mari, n'eo bet par da garantez Anna evit he mere'h, rak biskoaz n'euz bet eur vere'h ker fur, ken humbl, ker sentuz, ker parfet var an douar, hag Anna he ro goulskoude da Zoue. Nag a veritou e deuz dastumet o tispertia diouz he mere'h! o rei anezi da Zoue!

Santez Anna a icaz aliez da velet ar Vere'hez d'an templ, kredi a reer zoken ez eaz da joun da Jerusalem, evit beza tostoc'h d'he mere'h hag he gueleit aliesoc'h. Ne ouzer ket da be oad e varvaz santez Anna.

SONJOMP ERVAD :

I. — Bezomp el levenez, o sonjal e gloar santez Anna, rak hi a c'hell lavaret e guirionez: « Oll boblou ar bed am dis-

» klerio eüruz abalamour m'em euz roet eur vere'h d'an
» Tad eternal, eur vam d'ar Mab, eur pried d'ar Spered-
» Santel, eur rouanez d'an Iliz, eun alvokadez d'ar bec'he-
» rien, eur vamm d'an oll dud. » Pedomp gant fizians santez Anna: braz eo he galloud var Jesus ha Mari.

II. — Santez Anna e deuz bet eur c'hrouadur, hag ar c'hrouadur-ze a zo santella mere'h a zo bet hag a vezo var an douar-man: ar Vere'hez gloriüs Vari. He roet e deuz goulskoude da Zoue. Ha c'houi! Ha rai a rit-hu da Zoue ar vugale a c'houlouen beza d'ezhan? Hag ho sikour a rit-hu da vont da Zoue, o tiskleria d'ezho, avechou, peger kaer eo beza beleg, Frer pe leanez?

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOUERE

Sant Samson, Eskop

(480-565)

Samson, ganet e Bro-Zaoz, a dud a lignez huel, a oa c'hoaz bianik pa oue lakeat er skol gant sant Ildut, brudet dre he zantelez hag he vertuziou. Eur spered lem en devoa, rak-se ne zaleaz ket da veza unan euz ar re habila euz ar skolaerien; met, ar pezh a oa guelloc'h c'hoaz, unan euz ar re zantela e oa ive.

Aketuz d'ar studi, Samson a oa aketusoc'h d'ar beuden ha d'ar iun. Evit he zigoll euz ar boan a gemere, Doue a roaz d'ezan an donezoun a viraklou. Eun devez, ar skolaerien a oue kaset gant sant Ildut da c'houennat eur parkad ed: unan anezo a oue flemmet gant eun aerviber. Koenvi a reaz, ha dare e oa da vervel, pa reaz Samson sin ar groaz var he c'houli: pareet e oue raktal.

Deut da zen iaouank, Samson, var ali he vestr, a resevaz an Urziou sakr: beleget e oue gant sant Dubrius, are'heskop ar vro. Evit beva didrousoc'h, e c'houlenmaz digant sant Ildut mont en eun enezen, n'oa ket

goall bell ac'hano: roet e oue d'ezhan he c'houlen. En enezen-ze, e tremene an deiz o pedi hag o labourat, an noz o studia ar Skritur zakr, ken na deue ar c'houket da zerra he zaoulagad. Neuze e c'harpe eur pennadik he benn ouz eur voger pe eun dra benag all, hag e rea eur voreden en he za; met, ne deaz biskoaz da vele ebet.

Etre daou, he dad a gouezaz klanv. Mont a reaz d'he velet hag e rentaz d'ezan ar iec'hed en dro. Evit diskouez he anaoudegez vad da Zoue, an tad a lavaraz kenavezo d'ar bed evit mont da heul he vab d'ar gouent, gant ar pemp mab a oa gantan er gear.

Samson a lakeaz ar memez sonj e spered he vam, eun contr, eur voereb ha tri genderv d'ezan. Pa oue distro d'he gouent, e oue hanvet da zuperior; met evit eun nebeudik amzer hebken. Dilezer a reaz he garg evit mont da studia ar Skritur zakr d'an Irland; kredi a rea n'oa ket c'hoaz desket aoualc'h var ar poent-man.

O veza distro da Vro-Zaoz, ez eaz da veva gant pevar manac'h all en eur c'havarn spountuz; poan vraz a oue o tenna anezan ac'hano evit hel lakât da abad en eur gouent savet guechall gant sant Jermen a Aoxerr. Prestik goude e oue he-unan sakret eskop gant ar c'halloud da brezeg an Aviel e leac'h ma karje Doue he gas; e guirionez, ar Pab ne roaz eskopti ebet d'ezan da ren.

Sklerijennet gant eun eal, e teuaz da Vreiz: douara a reaz e kichen Dol. Sevel a reaz eur gouent evit ar venec'h a oa deut d'he heul; hag ec'h en em lakeaz da ziskleria guirioneziou ar feiz da dud ar vro a oa eur c'halz anezo paianed c'hoaz. Ar re zoken a oa bet badezet n'oa doa nemet an hano a gristenien; ho buez a oa ato paian: Samson a boaniaz d'ho sklerijenna.

Hanvet kenta eskop Dol, n'en devoue ken aked nemed da c'hounit eneo da Zoue. Var he c'houlen, Childbert, roue Frans, a roaz peb frankiz da Judual, roue Breiz, hag heman a stagas leveou braz ouz eskopti ar zant. Den na oufe lavaret ar boan a gemeraz Samson da lakât sklerijen ar feiz da bara er vro, ha da lamet anezi ar gizioù fall.

Erfin, leun a veritou, ha brudet dre he viraklou, goude beza lavaret d'he ziskibien lakât sant Magloar en he leac'h, ha beza resevet he zakramanchou diveza gant eur feiz birvidik, e rentaz he ene da Zoue er bloaz 565 goude donedigez Hor Zalver, d'he bemp bloaz ha pevar-ugent, pe var dro.

SONJOMP ERVAD :

E kear Dol hag er vro tro-var-dro, e oa c'hoaz kalz paianed pa zigouezaz eno sant Samson. Ar re a oa badezet n'oa doa nemet an hano a gristen: ho buez a oa ato paian. Lakit doun en ho spered n'eo ket aoualc'h beza badezet evit beza eur c'hristen mad ha mont d'ar baradoz. Red eo, ouspenn, ren eur vuez e guirionez kristen, da lavaret eo, red eo miret penn-da-benn gourc'hemennou Doue ha re an Iliz.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOUERE

Sent Nazer ha Sels, Merzerien

Sant Nazer a oa ginidik euz a Roum. He vam, santez Perpetua, her c'helemaz ervad, hag a reaz anezan eur c'hristen guirion. Badezet e oue gant sant Lin.

Ar c'hoant en doa da c'hounit eneo da Zoue, a reaz d'ezan kuitât Roum goude beza roet he zanvez d'ar paour. Dre ma 'z ea, Nazer a brezege an Aviel, hag a zigouezaz evelse e kear Milan. Diskuillet e oue evel kristen, ha gouarner kear a roaz urz da gregi enghan, d'her skourjeza betek ar goad, ha d'her c'has er meaz euz a gear.

Ar zant, laouen abalamour m'en doa gouzanvet eun dra benag dre garantez evit Jesus-Christ, a skoaz etrezek ar Frans. En eur gearik vian, hanvet Simies, dem-

dost da Nis, eur vam a zigasaz d'ezan he c'hrouadur, bianik c'hoaz, en eur lavaret: « Deskif, badezit, ha » dale'hit anezan ganeoc'h betek ma vezoc'h digeme- » ret gant Doue en he varadoz. » Ar vam kalounnek-se he devoue he goulen: Nazer ha Sels ne ouent mui dispartiet. Labourat a rejont ho daou asambles da c'hotmit tud da sklerijen ar feiz: dre ho c'homzou, dre skouer ho buez santel, dre ho dousder hag ho fasianted, dre ho miraklou, e rejont d'eun niver braz a baianed kredi e Jesus-Christ, er Gaul huela hag er Pays Bas.

Impalaer Roum a glevaz hano euz ar burzudou-ze, Rei a reaz urz da brefet Trey skourjeza Nazer ha Sels betek ma nac'hjent ho feiz. Met, na promesaou, na gourdrouzou na c'heljont biskoaz lakât Nazer da adori an doueou faoz; koundaonet e oue neuze da veza beuzet gant ar paotrik Sels, a 'z ea atao d'he heul.

Ho daou e ouent stlapet divar eur vag e kreiz eur ster braz. Raktal e tirollaz eur barrad goall amzer; ar vourrevien hag ho bag a oa o vont da ober pense, pa veljont Nazer ha Sels o kerzet var an dour evel pa vijent bet var ar c'haled. Straffillet ha spountet oll, ar paour keaz tud-man en ho anken en em erbedaz ouz an daou zant, ha Nazer en devoue truez outo. Var he beden an avel a dorrâz, ar ster a zeuaz da veza sioul, hag ar vag a c'hellaz douara. Ar burzud-se a zigoraz daoulagad ar vourrevien: anaout a rejont guirionez ar relijion gristen, ha Nazer a zeskaz d'ezo hent ar baradoz.

Goudeze, Nazer a gendalc'haz adarre da vont euz an eil kear d'eben betek an Itali, en eur brezeg an Aviel.

E Milan e oue kroget ennan a nevez. Ar gouarnner a c'houlemmaz neuze digant an Impalaer, petra da ober euz Nazer ha Sels. Reseo a reaz urz d'ho dibenna. Ar c'helou-ze a gargaz ho c'haloumon a joa hag a levenez: ha Nazer a lavaraz d'he vignoun iaouank, en eur starda anezan var boull he galoun: « Oh ! pebez heur vad evi: » domp, p'e guir Jesus-Christ a zo plijet gantan rei » d'eomp ar c'hras da reseo hirio kurunen ar verze- » renti ».

Dibennet e ouent var dro ar bloaz 68 goude donedigez Hor Zalver. Ar gristenien a enterraz ho c'horfou e kuz. Tost da dri c'hant vloaz goude, sant Ambroaz a reaz kas ho relegou d'an iliz kaer en doa great sevel e kear Milan.

SONJOMP ERVAD :

Nazer ha Sels a oa daou zen iaouank, leun a garantez evit Jesus-Christ: eur c'hoant braz o doa da lakât meuli Doue ha da labourat evit silvidigez an nesa: her great o deuz an eil hag egile.

Petra vir ouzoc'h-hu da gemeret skouer varno? Mar doc'h desket braoik, e leac'h tremen hoc'h amzer o lenn eur gazeten fall pe eul levr ampocounet benag, perak ne gemerfec'h ket eul levr mad, evel an Aviel, pe Buez ar Zent, evit ho lenn d'ar re all? Perak ne rafac'h ket katekiz d'ar vugale baour, ken dilezet gant ho c'herent pe ho mistri digaloun?

Ma n'oc'h ket desket, e c'helloc'h atao rei eun ali mad benag d'an nesa, en eur vont pe en eur zont; komz d'ezan euz a Zoue, euz he ene, euz ar baradoz. An hini en deuz en he galoun eur guir garantez evit Doue, a gav atao an tu da ober ar mad e giz pe c'hiz.

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GOUERE

Santez Martha, Guerc'hez

Santez Martha, c'hoar da Vari-Madalen ha da Lazar, a zo ganet e Bethanii, demdost da Jerusalem. Anavezet e oa dre ar vro evel eur skouer evit ar merc'hed iaouank dre he furnez hag he modesti; unan euz ar re genta e oue oc'h anaout Jesus evit ar Messiaz. Selaou a rea gant joa ha gant evez he gelemadurez hag heuill a rea he guzulioù santel. Ar veuleudi a rea euz stad ar guerc'hez, a lakeaz anezi da drei kein d'ar bed.

Martha a oa unan euz ar merc'hed santel a iea da heul Hor Zalver epad ma prezege he Aviel, evit pourvei d'he ezomou ha da ezomou he ebestel. He zi a oa evel eur gouent, dre an urz vad a rene ennan, ha brasa joa Martha a oa rei digemer da Jesus. Eun droiad, dreist ar re all, e oa prez varni o klask aoza eun tam benag d'Hor Zalver: epad an amzer-ze, he c'hoar ne roe sikour ebet d'ezhi; aon e doa da goll unan euz komzou he mestr. Martha a glemaz eta, met Jesus a respontaz d'ezhi: « Mar- » tha, Martha, poan ha tregas a gemerit gant kalz » traou, ha gouskoude n'euz nemed eun dra red; Mari » e deuz choazet eviti al loden vella, hag al loden-ze ne » vezo ket lamet diganti ».

Prest goude, Lazar a glanz; he c'hoarezed a gasaz raktal kemennadurez d'Hor Zalver, met Jesus ne deaz ket dioc'htu da Vethanii, ha pa zigouezaz eno, Lazar a oa maro hag enterret. Neuze Martha a lavaraz da Jesus: « Mestr, ma vijac'h bet ama, va breur ne vije ket mar- » vet; gouskoude, gouzout a ran e roio Doue d'eoc'h » kement a c'houlennoc'h digantan ».

Jesus a respountaz d'ezhi: « Ho preur a zavo adarre » euz a varo da veo. — Ia, ia, eme Vartha, her gouzout » a ran, da fin ar bed asambles gant an oll dud. — Me, » eme Hor Zalver, eo an hini a zav euz ar stad a varo hag » a ro ar vuez; an hini a gred emnon-me a vevo c'hoaz » ha pa vefe maro, hag an hini a zo beo hag a gred » ennon, ne varvo ket evit atao. Kredi a rit-hu an dra- » ze ? — Ia, eme Vartha, kredi a ran oc'h ar C'hrist, » guir Vab Doue, a zo deut euz an env var an douar. » Neuze Jesus a iez d'ar bez, hag a reaz da Lazar sevel ac'hano leun a vuez, ha ker iac'h ha biskoaz.

Divar an dervez-se, Martha hag he zud a zigemeraz Hor Zalver en ho zi, gant muioc'h c'hoaz a respet hag a anaoudegez vad eget araok.

Evel m'eo bet diskleriet e buez santez Mari-Madalen, ar Juzevien o doa great barn Jesus d'ar maro, n'oant ket evit gouzanv Lazar hag he ziou c'hoar, abalamour ma oa heman eun testeni beo euz galloud ha madelez Hor Zalver. Evit ober d'ezo mervel heb skuill

ho goad, setu ama ar zonz fallakr o devoue ar Juzevien: ho lakât a rejont ho zri en eur vag ha ne doa na stur, na goel, na rouenv ebed. Ho lezel a rejont da vont evelse gant ar mor, o fiziout ne zalejent ket da veza beuzet. Met Providans Doue ho diualle, hag a reaz d'ar vag douara e kichen Marseill, er Frans. Eno, Mari Madalen a iez da veva en eur c'havarn spountuz, hanvet ar Baum-Santel, a oa seiz leo euz ar porz, oc'h eur menez huel. Martha en em demmaz en eul leac'h distro, hanvet ar C'hoat-Du, dem-dost da gear Taraskon, hag a vodaz en dro d'ezhi eun nebeut merc'hed iaouank e doa gounezet d'ar feiz. Beva a rejont eno evel elez ken na blijaz gant Doue dont da gere'hat he zervicherez, ha rei d'ezhi he c'hurunen.

He c'horf santel a virer c'hoaz hirio gant kalz a respet e kear Taraskon.

SONJOMP ERVAD :

Evit eur guel petra zo kaeroc'h eget aoza boued da Vab Doue ha d'he goupagnunez? Gouskoude, e leac'h meuli Martha, Jesus a lavar d'ezhi: « N'euz nemet eun dra red » da lavaret eo, savetei hon ene.

Labourat o peuz great noz-deiz, eun tiek dispar oc'h bet, dastumet o peuz kalz danvez, bet oc'h er c'hargou kaera hag huela, meulet oc'h bet gant an dud, an dra-ze n'eo netra ma n'oc'h euz ket great ho silvidigez: kollet hoc'h ene, kollet peb tra!

AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ GOURE

Sant Guillou, Eskop

(1175-1234)

Guillou, ganet e parrez Sant-Alban en eskopti Sant-Briek, var dro ar bloaz 1175, a oue devot braz en he vugaleach; pa oue achu he studi gantan, e oue beleget,

Ar vertuz a blije ar muia d'ezan, a oa ar burete; en he iaouankiz e oue treac'h d'eur pez divezet a glaske he zougenn d'ar pec'hed. Gant an dra-ze, Guillou a oa mad da rei aluzen d'ar beorien: debri hag eva a rea nebeut, bez' e oa eur skouer euz ann oll vertuziou a dle kaout eun den a Iliz.

C'houec'h vloaz ha tregont e oa pa varvaz eskop Sant-Briek, hag an oll a roaz ho mouez d'ar zant evit ma teufe da ren an eskopti. Divar neuze, Guillou a oue santeloc'h c'hoaz; beva a reaz er baourentez, evit beza henveloc'h ouz Jesus-Christ ha kaout muioc'h da rei d'an dud ezomek. Maga a reaz kalz tud epad ar gernez vraz a zigouezaz er bloaz 1225 e Breiz; kouskat a reaz var ar c'halet, iun a rea aliez.

Ar Pab a lakeaz an eskop benniget-man e renk ar zent, a lavar anezan: « Maga a rea he zenved gant ar » brasa aked; pedi a rea evito, rei a rea d'ezo an oll » skoueriou mad a c'heller da gaout en eur pastor: » eskop Sant-Briek a oa eur sklerijen hag eun henor » evit an oll Vreiziz, dre he vouiziegez hag he zantelez ».

Dous ha trugarezuz e kenver an oll, ar zant a oa evelato stard pa veze c'hoant ober d'ezan mont eneb he zever. Duk Breiz, Per a Zreux, o veza goasket an dud a Iliz ha nac'het ho guir outo, ar zant, gant eun nebeudik eskibien all, a enebaz outan. An duk, kounnaret, a reaz d'ezan mont er meaz euz an dukach, da lavaret eo, er meaz euz a Vreiz-Izel.

Ar zant, rannet he galoun, a iez da Boitiers, eno e oue digemeret evel eun eal euz an env gant eskop ar gear-ze, klanvidik d'an ampoent. Ober a reaz e Poitiers labour an eskop, epad ar pevar bloaz ma choumaz eno en harlu, o poania hervez he c'halloud da ren an eneou varzu ar baradoz.

Duk Breiz a voaskaz, en amzer-ze, an dudhentil a renk huel; met ar re-man, d'ho zro, a enebaz outhan. Neuze an duk, hag a oa bet taolet an exkumunugen varnan gant ar Pab, a roaz frankiz d'an dud a Iliz.

Na c'hell den rei da entent gant pebez levenez e oue digemeret an eskop santel: bez' e oa tad an dud ezomek,

nerz an dud simpl, sklerijen an dud a Iliz, mignoun an oll dud a zoujans Doue. Mont a reaz d'ober eur bale dre an eskopti a bez evit terri ar giziou fall a oa en em zilet etouez an dud epad m'edo e Poitiers, met koueza a reaz klanv prest goude; mervel a reaz d'an 29 a viz gouere euz ar bloaz 1234, d'an oad a 59 bloaz.

Miraklou dreist kount a c'hoarvezaz var he vez, ha setu perak ar Pab Imosant IV hen lakeaz e renk ar zent, er bloaz 1247, trizek vloaz hebken goude he varo eüruz.

SONJOMP ERVAD :

Ar pastor santel-man a zalc'has penn da zuk Breiz en doa c'hoant laerez madou an Iliz: kentoc'h eget mont eneb he goustians, e lavaraz kenavezo d'he zenved ha d'he vro Breiz-Izel. He zever a reaz, ha netra ken.

Ar gounit kenta a oue d'an duk, ar gounit diveza a oue d'ar zant.

Eun nebeut bloaveziou a zo, er Frans a bez eo bet laeret ar c'houchou da genta, an ilizou hag ar presbitaliou da c'houde. Kouenchou hag ilizou a zo bet kemeret dre nerz; ar veleien a oa e presbitaliou savet gant arc'hant ar zant, a zo bet taolet er meaz evel torfetourien. Ar gristenien laosk a lavare: « D'ober petra enebi oc'h ar gouarnamant, oc'h » al lezenn? »

Ar guir gristenien o deuz sikouret ho beleien da enebi, evit an ilizou hag ar presbitaliou, evit merka sklear d'an oll, e laeret traou sakr ar zant en despet d'ar re a zo karget d'ho difen.

Ar gristenien vad o deuz bet ar c'holl kenta, sklear e oa kement-se araok, met difennet o deuz ho guir, difennet o deuz, hervez ho galloud, bolontez diveza ho zud koz; daoust hag ar c'holl diveza, o devezo ive, Doue hebken her goar: Hen a zo eternal.



AN UNAN HA TREGONT A VIZ GOUERE

Sant Ignas a Loyola

Foundatour Urz an Tadou Jesuisted
(1491-1556)

Ganet er Spagn, demdost da gear Bayonn er Frans er bloaz 1491, Ignas a oue den a vrezel en he amzer genta: dispount e oa, ha karet a rea an henoriou; na zonje nemeur e Doue.

D'he nao bloaz var 'n ugent e oue karget gant he roue da zifen Pampelun eneb ar Fransizien; senti a reaz laouen. Ar stourmajou var dro kear a oue tom meur a vech, soudardet Ignas en em ganne dispount, met ar Fransizien a oa ive tud a galoun; hi eo a c'hounezaz, Ignas a oue tizet he c'har gant eun tenn, hag he zoudardet a blegaz neuze, hag a roaz kear d'ar Fransizien. Ignas a oue kaset da vaner he dud, evit ma vije ententet mad outan.

Ar pare na deuz ket buan, abalamour gar ar c'hlanvour a oa bet dreset fall en dro genta, neuze ar c'habiten iaouank a c'houlennaz lemm evit dizinoui. Ne oue kavet da rei d'ezan nemet Buez ar Zent; lemm a reaz al levr kaer-ze, gant nebeut a blijadur da genta, met a nebeudou he galoun a jenchaz, hag e lavaraz: « Ar zent » a zo bet tud eveldon, perak ne rafen-me ket ar pezh o » deuz-hi great ? » Hag ar zonz-se a iez down en he spered.

Divar neuze, Ignas a oue eun den all. Da c'hortoz ma c'helfe ober pinijennou braz, e reaz pinijennou dister, en em skourjeza a rea bemdez, ha sevel a rea aliez en noz da bedi Doue. Mont a reaz da bardouna d'eur japel brudet braz, savet en honor d'ar Vere'hez, hag ober a reaz eno, epad tri devez leun, eur govesion euz he oll vuez d'eur manac'h santel. Da c'houde, ee'h en em roaz da Zoue evit mad hag evit atao, hag e stagaz he gleze

a istribill ouz aoter ar Vere'hez.

Neuze ez eaz d'eur gearik hanvet Manrez: eno ee'h ententaz ouz ar re glanv en hospital, e reaz seiz heur pedennou bemdez var bennou he zaoulin, hag ee'h en em roaz da gastiza kement he gorf dre ar iun hag ar binijen, ma 'z eo souez e vefe choumet beo. Bloaz benag e choumaz eno.

Pa oa klanv, Ignas en doa great veu da vant da bardouna da Roum ha da Jerusalem: seveni a reaz ar veuze, ha kalz poan en devoue, rak beva a rea divar an aluzen, dre ma 'z ea.

Eur vech distro d'ar gear ez eaz d'ar skol d'he dri bloaz ha tregont; studia a reaz en Alkala, da c'houde e Salamank, hag erfin e Paris. Er gear-man eo e savaz Urz an Tadou Jesuisted. Deiz gouel Hanter-Eost euz ar bloaz 1534, Ignas ha c'houec'h den iaouank all, sant Fransez Xavier en ho zouez, en em gonzakraz da servich Doue hag an eneo en iliz Montmartr, var eun dorgen azioec'h Paris.

Ignas a zistroaz d'he vro evit sklerijenna he genvroiz hag ho zikour d'en em rei da Zoue, da c'houde, e tistroaz d'an Itali. Reseo a reaz sakramant an Urz evit gellout ober muioc'h a vad; en em denna a reaz en eur c'hozti epad daou-ugent devez, araok lavaret he oferen genta.

Skriva a reaz reolen he Urz, kavet e oue mad gant ar Pab Paul III, aotreet e oue, d'ar 27 a viz guengolo euz ar bloaz 1540; hanvet e oue Urz Koumpagnunez Jesus. Ignas a oue great superior kenta an Urz, kas a reaz sant Fransez Xavier d'ar broiou pella, ha meur a hini euz an Tadou all, ama hag ahont, evit prezeg an Aviel, dislavaret gevier an heretiked, difazia ar Brotestanted, ha sklerijenna ar gristenien glouar.

Etretant hen a c'houarne an Urz gant furnez ha dousder, ne ehane da bedi evitan hag he Vreudeur, ha da ober pinijen; mervel a reaz d'an 31 a viz gouere euz ar bloaz 1556, d'he bemp bloaz ha tri-ugent.

He c'her ha ger he Urz a zo: « **Ad majorem Dei gloriam.** — Evit brasa gloar Doue. »

SONJOMP ERVAD :

Buez ar Zent, lennet gant evez, e deuz great eur zant euz ignas a Loyola; ha ni, pa seurt vad a ra d'eomp? Na leveromp ket, evel hiniennou: « Skoueriou ar zant m'eo bet lennet he vuez hirio, a zo mad evit ar re all », leveromp: « Er skoueriou-ze ez eus meur a dra hag a zo skrivet evit doun, hag a zo dioc'h va doare. »

AR C'HENTA DEVEZ A VIZ EOST

Sant Per en Ereou pe er Chadennou



Goude beza great d'an naved devez var 'n ugent a viz even gouel braz sant Per, prins an Ebestel, an Iliz a ra hirio eur gouel all en he honor, abalamour d'ar burzud a reaz Doue evit he denna euz ar prizoun hag euz ar chadennou m'oa liammet ganto.

Ar roue Herodez Arippa, unnek vloaz goude maro Hor Zalver, a voall-gasaz ar gristenien; rei a reaz urz da gregi e Per, evel ar penn anezo, d'he deuler er prizoun, ha d'he chadenna; karga a reaz soudarded d'he ziuall. An oll gristenien a oue rannet ho e'haloun pa glevchont petra oa e'hoarvezet, hag en em lakeaz da bedi stard, evit ma teuje Doue da renta d'ezo ho

fastor, ho zad muia karet. Doue a zelaouaz ho fedennou birvidik.

An Abostol santel, ar peoc'h en he goustians, a oa kousket eun nosvez; eun eal hen dihunaz, en eur lavarret d'ezan: « Sav buan ». Chadennou ar prizounier a gouezaz kerkent. « Kemer da e'houriz, ha guisk da voutou », eme e'hoaz an eal. Per a zentaz. An eal a lavaraz ouspenn: « Guisk da zillad, ha deuz d'am heul ». Per heñ heuliaz, a ieaz gantan er meaz euz ar prizoun, o tremen dre douez ar goardou heb beza gulet. Dor houarn kear a zigoraz anezhi he unan dirazho.

Goude, an eal a gerzaz gant Per hed eur ru; met padal, an Abostol n'her guelaz mui. Sant Per, ker souezet ma sonje d'ezhan e oa oc'h hureal, a lavaraz neuze: « Brema e e'houzon ervad eo plijet gant Doue digas » he eal d'am zenna euz a dre zaouarn Herodez. »

Eur burzud ker braz a reaz d'ar gristenien miret gant kalz a aked ar jaden m'oa bet liammet an Abostol santel ganti. An Impalaerez Eudoxi, o veza eat da bardouna d'an Douar santel, a resevaz ar jaden-ze digant eskop Jerusalem. Eudoxi a gemeraz anezi gant joa ha karantez hag he e'hasaz d'he merc'h.

Ar brinsez iaouank-man a oue karget he e'haloun a levenez pa resevaz eun tenzor ker presiuz: mont a reaz buan d'hen diskouez d'ar Pap, Sixt III. Ar Pap, d'he dro, a ziskouez d'ezhi eur jaden all, hag a oa bet o liamma sant Per, araok ma oue lakeat d'ar maro gant Neron, ha miret abaoue e Roum gant kalz a respet. An diou chaden lakeat gant ar Pap kenver ha kenver, a zeuaz anezo ho-unan d'en em staga an eil ouz eben, en hevelep doare ma ne reant mui nemet eur jaden hebken.

Ar burzud-man a greskaz e'hoaz ar respet a zouge ar gristenien d'ar chadennou presiuz-se; savet e oue, evit ho gorren, eun iliz kaer en honor d'an Abostol santel. An diou chaden ha ne reant mui nemet unan, a oue miret en iliz-man, hanvet iliz sant Per er Chadennou pe en Ereou. Ar chadennou santel, dre ar miraklou e'hoarvezet pa doucher outo, a zo deut da veza brudet dre ar bed oll, ha dre eno ive eo kresket en ho e'henver devosion ar gristenien.

SONJOMP ERVAD :

I. — Chadennou sant Per o deuz ar vertuz d'ober burzudou, setu perak e touger kalz a respet d'ezho. Mar en deuz Doue roet ker braz vertuz da draou o deuz servichet da yourrevi ar zent, pegen talvouduz ne dle ket beza dirazan ar poaniou o deuz-hi gouzanvet. Resevomp eta a galoun vad ar poaniou a gorf pe a spered a c'hell erruout ganeomp.

II. — Souezet oump o velet sant Per, eaz he goustians, kousket c'houek er prizoun, chadennet goulskoude, ha prest da veza lakeat d'ar maro. Met e Doue edo he oll fizianz; ne glaske nemet plijout d'ezan. Eüruz an dud a zigemer a galoun vad ar poaniou a gouez varno; eun devez da zont e vezint digollet gant an Aotrou Doue evit ho brasa mad d'ezo, hag he vrasa gloar d'ezan.

AN EIL DEVEZ A VIZ EOST (*Eizvetez gouel Santez Anna*)

Santez Anna Vened

Bez' on deuz, en eskopti Kemper, eur japel brudet en honor da zantez Anna; savet eo bet e palud Plounevez-Porzay: di e tired pardoumerien a villerou d'ar zul diveza a viz eost.

Brudeta pardoun a zo bet savet gant Breiziz en honor da Vam ar Verchez gloriuz Vari a zo evelato Santez Anna Vened; eno eo e teu ar muia tud.

Tri c'hant vloaz a zo, el leac'h m'ema brema Santez-Anna, e oa eur geriadennik hanvet Keranna. Guechall goz-goz, e oa bet eno eur japel en honor da zantez Anna, met var dro ar bloaz 700 ar japel-ze a oa kouezet en he foull. E park Bosenno, eun dorgen a verke c'hoaz plas ar japel: biskoaz n'en doa gellet soue'h an alar sank a en douar eno.

Er bloaz 1623, unan euz merourien Keranna, Yvon Nikolazik, a oue souezet gant traou burzuduz; guelet a rea aliez eur sklerijen gaer, eur zantez en he c'hreiz, guech en he gampr, guech er c'hrañj, guech e tal eur feunteun; klevet a rea eur c'han dudiuz; eur c'houl-

laouen var elum a sklerijenne anezan en noz betek he di.

Den devot, rak Nikolazik a gommunie bep sizun da nebeuta, al labourer a ieaz da c'houlouen ali eun Tad euz a Urz sant Fransez: hema, nec'het aouale'h, a lavaraz: « Pedit, ha bezit devotoc'h c'hoaz, evit ma plijo gant » Doue merka sklear he volontez. »

D'ar 25 a viz gouere 1624, Yvon Nikolazik a velaz, en eur zistrei d'ar pardaez-noz d'ar gear, ar zantez en eur sklerijen vraz; guisket e oa e guen, eur c'hoabren dindan he zreid, eur c'houlouen en he dourn; ne lavaraz ger d'an tiek. Met etre unnek heur hag hanter-noz, ar skeuden lugernuz en em ziskouezaz adarre dirazan: « Yvon Nikolazik, emezi, n'o pezet aoun ebet, me eo » Anna, mam an Itroun-Varia. It da lavaret d'hoec'h » aotrou Persoun e oa e kreiz park Bosenno, araok na oa » savet kear ebet dre ama, eur japel brudet, ar genta a » zo bet savet e Breiz-Izel en honor d'in. 924 vloaz ha » c'houec'h miz so abaoue m'eo bet diskaret; c'hoant » am euz e ve savet a nevez, rak Doue a fell d'ezan e » ve c'hoaz henoret va hano e Breiz-Izel. » Hag hi ha mont kuit.

An aotrou Persoun ne gredaz ket lavarou Nikolazik: hema, rannet he galoun, a bede muioc'h-mui he zantez karet.

Eun nosvez, santez Anna a gemennaz da Nikolazik mont da zizolo he skeuden, kuzet pell a oa, etouez atrejou ar japell goz. Nikolazik a ieaz da zihuna pemp test, eur sklerijen vurzuduz a hentechaz anezo; tri euz an testou a vele ar sklerijen koulz ha Nikolazik, an daou all n'he guelent ket: n'o doa ket great ho Fask er bloavez-se. Toullet e oue el leac'h ma choumaz ar c'houlouen a zav, en ear; eno e kavjot eur skeuden goat go-loet a zouar, hag a oa imach santez Anna gant ar Verchez Vari krouadurik: ar c'houec'h den a zaoulinaz devot dirak ar skeuden-ze a oa bet henoret gant ho zud, guechall goz; sevel a rejont da c'houde an imach ouz eur harz.

An dud a gredaz, met an aotrou Persoun na gredaz ket c'hoaz; abalamour da-ze e oue skoet gant Doue. Koeza a reaz klanv, ha ne gavaz ar pare nemet e feun-

teun Bosenno. Divar neuze, e rentaz testeni d'ar virionez.

An tan goall a grogaz e granch Nikolazik: devi a reaz ar mogerion, heb ober drouk na d'an traou a oa enni, na d'ar c'holo a oa e kichen; ar re fall a lavaraz: « Doue eo a sko Nikolazik abalamour m'eo gaouiad », met hen a anzavaz: « Doue en deuz va diouallet abala- » mour m'oun guirion em c'homzou, devet en deuz » mogerion ar c'hranch, abalamour va zad en doa he » zavet gant mein chapel goz ar Zantez. »

Ar bardounerien a ziredaz a bep tu, hag a roaz arc'hant: ar japel a oue savet buan, ar mean kenta a oue benniget d'ar 25 a viz gouere 1625.

Er bloaz 1793, an dispac'herien a zevaz imach ar zantez, ne oue saveteat nemet an hanter euz ar penn, a zo bet lakeat e traon ar skeuden nevez. En iliz kaer, a zo bet savet en amzer an Aotrou 'n Eskop Becel (1866), e veler, oc'h ar c'hœur, al leac'h m'eo bet kavet skeuden goz santez Anna.

SONJOMP ERVAD :

Tud a zo hag a ra goap euz ar re a ia da bardouna pell dioc'h ar gear: fall a reont; ma ne blijfe ket ar pardounion santel-ze d'an Aotrou Doue, ne rofe ket kement a c'hrason d'ar re a ia da bardouna, pa 'z eont gant eur guir devosion.

AN TREDE DEVEZ A VIZ EOST

Korf Sant Stephan kavet

(415)

D'an 3 a viz kerzu 415, epad eur zec'hor vras hag a rivine ar vro, ar beleg Lusian a oa kousket en eur gampr euz sekretiri iliz Caphargamala, er Judee. Eno eo e oa bet sebeliet guechall korf sant Stephan, kenta merzer, met den n'her gouie.

O veza dihunet, var dro nao heur noz, ar beleg a velas dirazhan eun den koz, braz ha skeduz meurbet, baro hir ha guen d'ezan. Guisket e oa e guen, hag en he zourn e touge eur vialen aour. O veza tosteat ouz Lusian, an den koz her galvaz dre he hano a benn teir guech, hag a gemennaz d'ezan lavaret da eskop Jerusalem dont da zigeri ar beziou el leac'h m'edo he relegou ha re eun nebeut servicherien all da Jesus-Christ: « Meur a hini a c'helfe divar gement-se, » emezan, kaout trugarez digant an Aotrou Doue. » Lusian, o veza goulennet digantan: « Pion oc'h ? » an den koz a respountaz: « Me eo Gamaliel, an hini en deuz » kelennet sant Paol var al lezen. Er bez kenta, diouz » tu ar Zav Heol, e vezo kavet korf sant Stephan, la- » bezet gant ar Iuvezien dirak dor Jerusalem: Niko- » dem, an hini a iea da velet Jesus en noz, a zo en he » gichen en eun arched all. En trede arched, e kavot » korf va mab Abidas, maro d'an oad a ugent vloaz. » Va c'horf d'in-me, eme c'hoaz Gamaliel, a oue lakeat » ive en arched va mab, goude va maro. »

Lusian en devoue aoun o kredi re vuan ar c'homzou-ze; en em rei a reaz da iun ha da bedi evit kaout sklerijen digant Doue. Met d'ar guener varlerc'h, Gamaliel en em ziskouezas d'ezan adarre, peder baner en he zourn: teir aour hag unan arc'hant. Diou euz an deir baner aour a oa karget a roz guen, hag an drede a roz ruz. Euz ar baner arc'hant e teue eur c'houez vad dudiuz. Lusian a c'houennaz petra oa ar panerou-ze. « Ar panerou-ze, eme Gamaliel, a verk hon relegou. » Ar roz ruz a verk sant Stephan; an eil baner, Nikodem: » ar baner arc'hant, va mab Abidas, maro heb beza » kollet he burete. » Lusian a zihunaz neuze, hag a drugarekeaz Doue; met kendere'hel a reaz da iun: n'ez eaz ket vardro an aotrou 'n Eskop.

D'ar guener varlerc'h, d'ar memez heur, Gamaliel en em ziskouezaz a nevez da Lusian, en eur c'hourdrouz anezan abalamour d'he leziregezh. « Ententit mad, eme- » zan, kerkent ha ma vezo savet ar relegou, e vezo fin » d'ar zec'hor a ren dre ar vro. » Lusian ne vare'hataz

mui. Mont a reaz da Jerusalem da ziskleria d'an Aotrou
 'n eskop ar pezh en doa klevet. An eskop a ouelaz gant
 al levenez, hag a lavaraz d'ezan e tlie ar relegou santel
 beza dindan eur bern mein, e kichen an iliz. Raktal e
 oue kroget el labour; met eur manac'h devot a lavaraz
 d'al labourerien: « N'eo ket aze eo d'eo'h toulla, ama
 » eo; » hag e tiskoueze d'ezho eul leac'h all. O veza
 toulet el leac'h-se, e oue kavet an tri arched, gant eur
 mean hag a zouge an hanoiu-man: Stephan, Nikodem,
 Gamaliel, Abidas. Kerkent ha ma oue bet digoret
 arched sant Stephan, an douar a grenaz, hag euz ar bez
 e savaz eur c'houez vad dudiuz. Eun niver braz a dud
 a oa var al leac'h; meur a hini, en ho zouez, a oa gouliet
 pe skoet gant eur c'hlenved benag: trizek ha tri-ugent
 a gavaz ar pare var an taol. Korf sant Stephan a oa eat
 e ludu, met he eskern a oa en ho fezh; kavet e oue ive
 eun nebeut euz he c'hoad. Eul loden euz he relegou a
 joumaz e Caphargamala, al loden all a oue klozet en
 arched, ha digaset da iliz Sion, e Jerusalem. Neuze ar
 glao a gouezaz puill, hag a rentaz buez d'an donar
 fraillet gant ar zec'hor.

SONJOMP ERVAD :

Relegou ar zent eo ar pezh a zo choumet anezo goude ho
 maro: entent a reer dre eno ho eskern dreist oll. Bezomp
 evito leun a respet, rak korfoù ar zent a zo bet templou ar
 Spered-Santel. Endra m'edont var an douar, epad ma rede tud
 ar bed varlerc'h ar blijadur, oc'h heul ho zechou fall, ar zent
 o deus kastizet ho c'horf dre bep seurt pinijennou, mouget
 en ho c'haloun bep seurt ioulou fall. Setu perak, eun deiz
 ho c'horfoù a zavo skeduz euz ar bez: « Relegou eur zant,
 » eme sant Ian Chrysostom, a zo en eur barrez, evel eur
 » c'hastell evit he difen. »



AR PEVARE DEVEZ A VIZ EOST

SANT DOMINIK

(1170-1221)

Ar zant-man a zo ganet er Spagn. Galvet eo bet gant
 Doue evit beza dreizan he-unan, ha dre an Urz santel
 en deuz savet, difennour ar feiz hag ar relijion. He dad
 hag eun eontr d'ezan, eo a lakeaz doujans Doue da ren
 abred en he galoun.

Goude beza great he studi var skianchou ar bed, ec'h
 en em roaz da zeski ar skianchou sakr: dre ma kreske
 he zeskadurezh, e kreske ive he zantelezh. Epad eur ger-
 nezh vraz, e roaz evit sikour ar beorien kement en devoa:
 arc'hant, arrebeuri, leorion. Eun devez, eun intañvez
 keaz a zeuaz da c'houlenn digantan peadra da brena he
 mab, paket gant an Turked divadez, hag er sklavach
 ganto. Ar zant n'en doa mui netra. En em ginnig a reaz
 da vont he-unan e sklavach e plas an den iaouank; met
 an intañvez, souezet o velet he garantezh, a drugarekeaz
 anezan, hag a viraz outan da gas he vennoz da benn.

Mar doa aketuz da bourvei da ezomou ar c'horf, e oa
 aketusoc'h c'hoaz pa veze hano euz ezomou an ene.

Goude beza resevet an Ursiou sakr, e prezegaz ar
 binijen d'ar bec'herien gant kement a nerz ma teue an
 dud ar muia kaledet er pec'hed da jench buez ha da zis-
 trei da Zoue. Kement a dud a zirede d'he zelaou, ma
 veze re vian an ilizou evit ho digemeret, ha ma veze red
 d'ezan prezeg var an tachennou. Mont a reaz euz an eil
 karter d'egile en eur ziskleria an Aviel.

Goude beza labouret gant kalz a frouez er Spagn, e
 teuz e Frans: guelet a reaz gant glac'har e rea eur
 rummad heretiked freuz ha dizurz el Languedoc hag
 er C'hresdeiz euz hor bro. Poania a reaz eno, epad

seiz vloaz, gant ar brasa aket, evit ho gounit da Zoue. Mont a rea bepred euz an eil kear d'eben var he droad, heb eur guennek en he c'hodel, harpet var he fizianz vraz e galloud an Aotrou Doue.

Doae a vennigaz he labour, ha guelet e oue ouspenn kant mil den o tistrei, dre aket Dominik, d'ar guir relijion. Ar vad dispar a rea an den santel a lakeaz tud gouizieg ha leun a feiz da c'houlen digantan kemeret perz en he labour evit silvidigez an enéou; ar zant a roaz d'ezo eur reolen a vuez, hag en doare-ze eo bet savet Urz sant Dominik. Menec'h an Urz nevez-man a dlie prezeg an Aviel, ha labourat da c'hounit an here-tiked d'ar guir feiz.

Dominik en devoa eun devosion birvidik e kenver Mam Doue, hag ar Vam vad-se e devoa evitan ar brasa karantez. Deski a reaz d'ezan ober d'an dud lavaret ar Rozera en eur zonzal e mysteriou buez Hor Zalver Jesus-Christ var an douar, hag ar zant a genteliaz an dud var an devosion-ze; d'an oll e lavare heb ehan: « Bezit » mad da henori an Itroun-Varia dre ar Rozera. »

Ar Vreuriezh a zougaz kalz frouez kercent ha ma oue anavezet: eun niver braz a dud a zistroaz dreizi da Zoue. Ar c'hiz da lavaret ar Rozera a zo bet skignet a nebeudou da c'houde etouez ar gristenien, abalamour d'an traou burzuduz e deuz great ar Vere'hez e kenver ar re a vez devot da lavaret ho chapeled. Breuriezh ar Rozera a zo anavezet hirio dre bevar c'horn ar bed, e kement leac'h ma 'z euz kristenien; an induljansou braz kinniget gant an Iliz d'ar re a zo er Vreuriezh, ar grasou burzuduz roet d'ezo, a verk sklear e plijont kalz da Zoue ha d'ar Vere'hez.

Erfin, goude beza sklerijennet kalz a dud, ha saveteat eur maread heretiked, sant Dominik a roaz d'he Vreudeur he aliou diveza, hag a rentaz gant joa he ene d'he Grouer, er bloaz 1221, d'he vloaz hag hanter-kant.

Lavaret a rea eun devez da unan euz he vignoned: « Doue en deuz selaouet atao va fedennou. »

SONJOMP ERVAD :

Breuriezh ar Rozera, savet gant sant Dominik, e deuz great

eur vad dispar dre ar bed. Mar demaoc'h dija er Vreuriezh, bezit aketuz da ober ar pezh a zo merket, hag o pezo perz en oll bedennou a ra bemdez Breudeur ha C'hoarezed ar Vreuriezh. Ma n'emaoc'h ket c'hoaz var he rollou, lakit buhan hoc'h hano. N'o pezit ket nec'h d'en em zamma, rak n'eo ket pec'hed choum heb lavaret pedennou ar Vreuriezh, met an nep a joum heb ho lavaret, na c'hounit ket an induljansou a zo staget outo. Eun dra vad eo mont er Vreuriezh, abalamour plijout a reer muioc'h da Zoue ha d'ar Vere'hez, ha muioc'h a zikour a c'heller rei d'an anaoun.

AR PEMPED DEVEZ A VIZ EOST

Dedi Iliz Itroun Varia an Ere'h

Var dro ar bloaz 363, en amzer ar Pab Liber, eur c'hristen euz a Roum, pinvidig ha leun a feiz, a zonzaz implija he vadou evit brasa henor an Itroun Varia. Diskleria a reaz he zonz d'he bried, hag houman, o veza n'o doa ket a vugale, he aliaz da gas he vennoz da benn.

Goulen a rejont stard ma plijfe gant ar Vere'hez diskouez en eun doare benag ar pezh a rafe ar muia plijadur d'ez. An daou bried, en esper kaout ar c'hras-se, a reaz neuze piniennou braz, pedennou hir, aluzennou pinvidig. Ar Vere'hez benniget en em ziskouezaz eun nosvez dirazo, dre ho c'houk, hag a lavaraz d'ezo e oa bolontez he mab hag he hini ec'h implijent ho danvez da zevel en he henor eun iliz var menez Eskuillin, el leac'h a gavjent antronoz goloet e ere'h. Leun a joa, an daou zen a ieaz da ziskleria d'ar Pab lavarou ar Vere'hez, met Liber a oa bet sklerijennet, hen ive, gant an Itroun Varia.

Laouen oll, ha leun a fizians e komzou ar Vere'hez santel, ar Pab a reaz ober eur brosesion gaer, mont a reaz d'ar menez gant an oll dud a Iliz, hag eun niver

braz a bobl. Eur vech var ar menez, ar bardoumerien a velaz e oa eul loden anezan goloet a ere'h, ha goulskoude an dra-man a oa e kreiz an hanv, d'ar bemp a viz eost, pa vez tomm an amzer e Roum. An oll a rentaz trugarez d'ar Vere'hez, hag an iliz a oue savet, eun iliz euz ar re gaera a c'hellet da velet.

Hanvet da genta iliz Itroun Varia an Ere'h, abalamour d'ar burzud a verkaz he flas, an iliz-se a oue hanvet da c'houde iliz ar **C'hraouik** abalamour m'eo bet lakeat ebarz kavel ar Mabik Jesus, hag erfin iliz Santez-Mari-Veur, abalamour m'eo ar vrasa euz an ilizou savet en honor d'ar Vere'hez, e Roum.

Ar plench a zo bet kavel ar Mabik Jesus e kraou Bethleem a zo dindan an aoter vraz, e kreiz an iliz: c'houec'h a zo anezo. Ar re vrasa o deuz daou droatad mad a hirder, hag eun hanter-troatad a ledander; n'o diskouezer d'ar gristenien, nemet d'ar 24 a viz kerzu. Ho miret a reer en eur voest arc'hant kaer ha pinvidik.

Lambrusk an iliz a zo bet alaouret gant an aour kenta kavet en Amerik gant Kristoph Kolomb; Kristoph en doa kaset an aour-ze da rouanez Spagn, Isabell; houman he roaz d'ar Pab evit trugarekât Doue.

Pa oue diskleriet e konsil Ephes, e tle an Itroun Varia beza hanvet Mam Doue, pa 'z eo guir eo mam d'an eil Fersoun euz an Drindet en em c'hreat den, ar Pab a reaz lakât, en iliz Itroun-Varia an Ere'h, testenion kaer euz ar virionez-se.

Var he urz, an artizaned a livaz skeudennou pe daolennou hag a verk kenteliou tennet euz an Aviel; an taolennou-ze a vez guelet c'hoaz hirio, hag a ziskouez: an arc'heal Gabriel o saludi ar Vere'hez Vari evel mam en em c'hreat den evit savetei an dud; a ziskouez ouspenn eun eal o tiskleria da zant Joseph e tle choum gant an Itroun Varia, abalamour m'eo mam dre vertuz ar Spered-Santel; an tri roue oc'h adori ar Mabik Doue etre divreac'h he vam; ha meur a skeuden all hag a verk oll eo Mari guir vam Doue en em c'hreat den.

Sant Gregor, Pab, o velet ar vosen oc'h ober reuz dre

an Itali a bez, a gemennaz mont e proesion d'an iliz-man, evit kaout digant Doue, dre zikour ar Vere'hez benniget, ar c'hras da velet ar c'hlenved spountuz-se oc'h ehana.

An iliz-man, merket he flas gant ar Vere'hez gloriuz Vari he-uman, a zo eta brudet dre ar bed oll; pardounerien a zired davedi euz a bep bro. Deiz braz ar gouel, e miz eost, e vez taolet divar c'horre an iliz, bleun guen var ar pave, evit digas da zonzj d'an dud euz a vuzud an ere'h.

SONJOMP ERVAD :

Mar oc'h euz bet madou digant Doue, grit eun implij mad anezo; kemerit euz ar madou-ze ar pez a zo dleet evit delc'her ho renk, met n'ez it ket d'ho forani hep ezom, na dre fougerez. N'eo ket evit maga ho lorc'h eo oc'h euz resevet madou digant Doue, ha ne fell ket d'ezan e rafac'h eun implij fall anezo. Red e vezo, deiz ar varn, renta kount da Zoue euz a bep tra: ar pinvidig a ranko diskleria an implij en dezo great euz he zanzev; ar paour a vezo easoc'h d'ezan en devez-se.

Mar oc'h eus eta peadra, grit aluzen d'ar paour, aluzen d'an iliz, neuze Doue a vezo trugarezuz en ho kenver.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ A VIZ EOST

HOR ZALVER VAR MENEZ THABOR

Salver ar bed a gemeraz tri euz he ebestel, Per Jakez ha Ian, hag ho c'hasaz gantan var menez Thabor. En em denna a reaz eun tammik diouto evit pedi, hag epad ma pede, e viskaz eun nebeut euz he c'hloar dirazo; chench a reaz en eun doare burzuduz. Sked he ene benniget o veza deut da bara var he gorf sakr ha santel, a

reaz d'ezan beza kaer dreist da velet; n'eo ket an den hebken en em ziskoueze, met an Den-Doue: he vizaeh a deuaz da veza skeduz evel an heol, hag he viskamant guen evel an ere'h.

Moizes hag Elias en em ziskouezaz gant Hor Zalver: komz a reant gantan divarbenn myster braz he varo e Jerusalem. Moizes hag Elias, unan a bep tu d'Hor Zalver, a rente testeni d'ezhan: « Hen a zo ar Mestr, ni a zo he zervicherien ». Sant Per, leun a joa o velet kement all, a lavaraz neuze: « Mestr, ama eo eun dudi beza, ha mar kirit, e savimp ama tri del, unan evidoc'h, » eun all evit Moizes hag eun all evit Elias. »

N'en doa ket peurachuet he gomz pa oue goloet, hen hag an daou abostol all, gant eur goabren lugermuz. Klevet a rejont euz a greiz ar g'gabren eur vouez o lavaret: « Hema eo va Mab muia karet, an hini a ra » va oll flijadur, selaout-hen. » An tri abostol, o klevet ar vouez-se, hag o velet traou ker burzuduz a oue spountet, hag a gouezaz d'an douar. Hor Zalver a lavaraz d'ezo sevel; senti a rejont, met pa zeljont, ne veljont mui den nemet Jesus, heb sked na gloar.

Er meaz c'hoaz anezo ho-unan, an diskibien a ziskennaz gant Jesus divar ar menez; mall e oa ganto embann ar burzud o doa guelet. Met Jesus en doa c'hoant rei d'he ebestel eur gentel gaer a humilite, hag a zougaz he zifen: « Na leveroc'h ger da zen, ken na vezo savet » Mab an den euz a varo da veo. »

Salver ar bed a ziskouezaz eun nebeut euz he c'hloar var ar menez da dri euz he ebestel, evit rei d'ezo da entent peger braz e tlie beza ar sked en dije guir da gaout divezatoc'h, goude he varo. Ouspenn-ze, ar zonz euz ar sked-se a dlle kemmerza an ebestel da zeiz Pasion Jesus; pa vije Hor Zalver dilezet gant an oll, an tri abostol muia-karet a dlefe beza choumet stard en ho c'harantez evitan, pa 'z eo guir o doa guelet he c'hloar.

Jesus n'en doa kemeret nemet tri euz he ebestel, evit deski d'eomp an humilite: ne ziskouez he c'hloar nemet d'eun nebeudik tud; mont a ra ganto var eur menez huel, evit merka ne ro peurlies a grasou euz an

dibab nemet d'ar re a zo pelleat diouz trouz ar bed, ha ne zonzont nemet e Doue.

SONJOMP ERVAD :

Pa velaz sant Per Jesus en he c'hloar, ez eaz er meaz anezan he-unan, hag e lavaraz: « Na dudius eo beza ama! » Mar deo ker kaer guelet Jesus hebken, pebez eürusdet on devezo pa velimp an Drindet santel, gant Jesus hag ar Ver-c'hez Gloruz Vari, an oll zent, an oll elez!

Pa vezo dizec'het ho kaloun gant an dristidigez, pa venoc'h koueza en dizesper, sonjit er gloar a zo ouz hō kortoz er Baradoz, hag ho pezo nerz da zougen ho kroaz a nevez.

Heuilomp Jesus var menez Kalvar, koulz ha var an Thabor, klask a dleomp anezan evitan he-unan, ha n'eo ket abalamour d'eomp eo. Levenez hor bezo er bed all, goude m'on dezo douget hor c'hroaz varlerc'h Hor Zalver var an douar-man.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Kajetan

(1480-1547)

Ar zant-man a zo ganet en eur gearik tost da Veniz, en Itali. Dioc'htu goude ma oue badezet, he vam her c'hinnigaz da Zoue, hag hen lakeaz dindan skoazel ar Ver-c'hez Vari. Ker fur ha ken devot e oa en he vugaleach ma oue leshanvet ar zantik: guir en doa da veza meulet ha fougeat gant an oll, abalamour d'he spered ha d'he skiant.

Tad ha mam Kajetan o veza deut da vervel, a lezaz gantan madou braz, met hen a reaz buan sevel eun iliz, ha staga a reaz outi leve aouale'h evit pourvei da ezomou eur beleg karget da entent ouz an dud divar dro.

Truez en devoa ouz an dud keiz-man abalamour m'edont re bell dioc'h ho iliz parrez: n'o devoa den da gemeret soursi anezo hag e riskl edont da joum heb oferan da zul. Ar zant a dostea aliez ouz ar zakramanchou gant eur garantez birvidik; hiniennou a gemere skouer dioutan.

Goude-ze ez eaz da Roum. He zonzj a oa beva eno dianavezet, met he vertuziou hen diskuillaz. Ar Pab Jul, eil euz an hano, a c'hoanteaz he anaout hag oc'h anaout he zantelez vraz, hen aliaz da reseo an Ursiou sakr. Pa oue beleget, e oue henvel ouz eun eal ouz an aoter, hag henvel euz eun abostol er gador-brezeg.

Bez' ez oa e Roum eur Vreuriezh hanvet Breuriezh ar Garantez e kenver Doue, savet evit e'houeza e kalonou an dud tan ar guir garantez. Kajetan a ieaz er Vreuriezh-se, ha lakât a reaz karantez Doue da greski c'hoaz enni. Distrei a reaz goude-ze d'he vro, hag eno ec'h en em roaz d'an oberou a drugarez: he vrasa plijadur a oa mont da velet ar re glanv en hospitaliou.

Ar zant-man, gant he c'hoant da greski devosion an dud a Iliz, a zavaz evito eun Urz kaer. Rei a reaz d'ezo eur reolen a vuez, a lakea anezo da veza henvel ouz ebestel: n'o doa ket a gounje da gaout nag arc'hant na leve. Reolen an Urz a zifenne outo ouspenn, kestral pe c'houlenn netra. Ne veze aozet tam boued ebet en ti, ha pa zeue mare ar pred, ne veze avehou netra da zebri. Beva a reant divar ar boued a veze digaset d'ezo gant an dud vad da vare ar pred, hag ar pezh a joume euz ho dilere'h a veze roet dioc'htu d'ar beorien. Ne virent netra evit an devez varlere'h, met fiziout a reant var brovidans Doue.

Ar foundatour santel-man en devoue ar joa da velet kalz tud devot o tont da c'houlenn beza resevet en he Urz: sevel a reaz evito peder gouent e Roum, e Veniz, e Visanz hag e Napl. Er c'heariou-ze hag e kement kear ma labouraz enni ar zervicher braz-man da Zoue, e oue gullet ar vuez kristen o vellât kalz etouez ar bobl, an noblans hag an dud a iliz. He garantez tener evit Jesus-Krist a greske dre ma kreske he labourou. Der-

c'hent gouel Nedelek, ez eaz eur bloavezh da iliz Santez-Mari-Veur e Roum evit tremen eno an noz, hag epad ma pede, ar mabik Jesus en em ziskouezaz dirazan dindan furm eur c'hrouadur nevez ganet.

Goude eur c'hras ker kaer, he vuez ne oue mui buez eun den; he garantez e kenver Doue a oa ker birvidik ma veze gullet an tan o tont euz he c'hinou pa gomze, hag he vizach a veze bepred entanet. Tremen a rea betek eiz heur amzer dioc'htu o pedi, hep flach an distera.

Erfin, tri bloaz var 'n ugent goude m'en doa savet he Urz, e rentaz he ene da Zoue, e Napl, er bloaz 1547; d'he zeiz vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Meulomp providans Doue a vag abaoe ouspenn tri c'hant vloaz gant kement a vadelez hag a largentez an Tadou euz Urz sant Kajetan, hanvet Theatined. N'o deuz manket a netra er bloavezhioù kernez a zo bet en hon amzer; er c'hontrol eo, sikouret o deuz neuze eun niver brasoc'h a dud paour. O furnez ha madelez Doue! Na pegen dous eo sonjal ennoc'h! Arabat eo d'eoc'h eta, ene kristen, kaout nec'hant gant aoun na vankfe d'eoc'h an traou a zo red ho c'haout: Doue n'ho tilezo biken, mar o peuz fizians ennan. Ho tad a zo en env a anavez hoc'h ezomou, ha goest eo d'ho sikour. Bezit guir zervicher d'ezan, lakit ennan hoc'h esperans: dougen a raio eur re bennag da zont d'ho sikour, hag ober a raio eur burzud en ho kenver kentoc'h eget ho lezel en dienez.



AN EIZVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Siriak, Sant Larg ha Sant Smaragd

An impalaer Maximian, unan euz ar mistri goasa o deus renet e Roum, en doa roet urz da lakât ar gristenien da zarbar ar vansounerien a oa o sevel eur palez d'ezan e Roum. Difen a oa d'ober guelloc'h stad anezo eget euz ar sklavourien, labourat a dlient en tu all d'ho nerz, ha n'o devoa ket hanter-voued da zibri. Sonj a oa d'ho dizec'ha evelse ha d'ho laza a nebeudou dre ar skuider hag an dienez: seul hiroc'h e padje ho merzerenti, seul krisoc'h e vije. Eun dra mantruz e oa gueleat an niver braz-ze a gristenien a bep oad hag a bep stad, o toulla an douar, o kerc'hat dour, o tougen mein, o ruill hag o stoleja soliou.

Siriak, Larg ha Smaragd, tri gristen karantezuz, a oa choumet da genta heb beza diskuillet. Mont a reant bemdez da gemnerza ho breudeur en ho labour, da rei sikour d'ezo en ho dienez en eur gas boued d'ezo dre guz: ho alia a reant er memez amzer da jourm bepred stard en ho feiz, ha da viret lezen Doue. Ar Pab, sant Marsellin, o veza bet anaoudegez euz ho nerz kaloun, hag euz ho c'harantez, a reaz Siriak avieler.

Prest goude e ouent paket ho zri, eun droiad ma tougent boued hag aluzemou d'ar gristenien: kroget e oue enno, ha koundaonet e ouent da labourat evel ar re all. An amzer ma tremenjont evel sklavourien ne zervichaz nemet da ziskouez sklearoc'h ho c'harantez birvidik, rak prest e vezent atao da zikour ar re all, da gemeret perz e poan pep hini. Ne oa ket auale'h d'ezo dougen ho beac'hiou ho-unan, dougen a reant c'hoaz beac'hiou ar re all, ha dreist oll beac'hiou ar re a oa dija sempl ha kabac'h.

Mistri al labourerien a jourmaz souezet braz o velet karantez an tri vignoun, ho dousder, ho aked da zikour ho breudeur, ho levenez e kreiz labourou ker poaniuz, hag a ziskleriaz an oll draou-ze da Vaximian. An impalaer digernez ne oue ket tenerreat he galoun o klevet kement all; dont a reaz zoken da veza krisoc'h. Ober a reaz da genta teuler er prizoun an tri gristen kalounek, ha goude, e reaz ho dibenna. Ho merzerenti a erruaz er bloaz 303 goude donedigez Hor Zalver Jesus-Christ.


SONJOMP ERVAD :

Souezet oump o klevet gant pebez karantez an tri zant-man a zikoure ho nesa; pa velent unan benag re zammet, e kemerent ar beac'h ho-unan; pa velent unan koz benag pe unan all varnez sempla gant he labour, e reant ho-unan al labour evitan. Peger kaer e oa ar garantez etouez ar gristenien en amzer-ze! Pegen nebeut a garantez a zo brema etouez an amzeien hag ar breudeur memes! Pegen aliez e vez kavet hirio tud dic'hras ha didruet, ha ne fell ket d'ezo ober netra evit den! Tro hon euz alies, goulskoude, da renta servich d'hon nesa, mar karomp. Bezomp eta karantezuz ha madelezuz e kenver ar re all: n'eo ket diez kement-se, hag evelse e reno ar garantez hag an unani etouez an dud; ouspennze, ar pezh hor bezo great a vad e kenver hon nesa dre garantez evitan, Doue her paco evel pa vije bet great d'ezan he-unan.



AN NAVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant J.-M. Vianney, Persoun Ars (1786-1859)



Ian-Vadezour-Mari a zo ganet e Dardilly, en eskopti Lyon, d'an 8 a viz mae 1786; he dad hag he vam a oa

labourerien douar, ha kristenien vad. Doue a roaz d'ezo e'houec'h krouadur; Ian-Mari a oue ar pevare anezo.

Ar paotrik bian a zeskaz abred he greansou, ha pa oa e'hoaz iaouankik, ee'h en em denne aliez el leac'hioù distro da bedi: eur fizianz vraz en doa en Itroun Varia.

Goude he bask kenta, Ian-Mari a oue kaset da labourat d'ar park gant he vreudeur, bez' en deze ganthan aliez skeuden ar Verchez. Lakât a rea ar skeuden-ze e penn an ero en doa da e'houennat pe da gempen, ha dre ma 'z ea gant he labour, e selle avechou ouz ar skeuden evit kaout muioc'h a galon. Ar paotrik na zonzaz da vad mont da veleg, nemet vardro he drivac'h vloaz, neuze e toullaz kaoz euz he e'hoant d'he dud. Ar re-man a oa re baour evit paea mizou he studi, met eur beleg santel ho zikouraz. Goude kalz poan, rak speret ar paotr yaouank a oa poud da zeski, ar zant a oue beleget. Kaset e oue da gure en eur barrez, met ne joumas eno nemet daou vloaz; hanvet e oue, da e'houde, persoun e parrez Ars.

An aotrou Vikel vraz, en eur rei he baperou d'ar persoun nevez, a lavaraz d'ezan: « Nebeut a garantez Doue » a zo er barrez-se, met e'houi a entano ar garantez-se e kaloun ho parresioniz. » E guirionez, tud Ars a oa laosk en ho feiz, d'ar mare-ze. An oferen a veze dilezet var an distera digarez; epad ma veze hanter e'houlo an iliz, an hostaleriou a veze leun-chek; rouez e oa an dud a dostea ouz ar zakramanchou: dansou a veze bep sul, ha varlerc'h an dansou-ze e teu atao kalz dizursiou.

An den santel a lavaraz: « Va fark n'eo ket kaer, » griet eo gant al louzeier fall, poan am bezo; » met na falgalounaz ket. En em lakât a reaz da nevezi an iliz, hag o velet an dud, nebeut ha nebeut, o tiredet da Ars, e reaz kreski an iliz evit sevel diou aoter muioc'h enni. Er memez amzer, en doa savet breuriezou, dreist oll Breuriez ar Rozera ha Breuriez ar Zakramant. A benn nebeut bloaveziou, ar barrez oll a oa nevezet: na velet mui a zansou, na joume mui nemet eun hostaleri er bourk; an oll a zirede bep sul d'an iliz; den na labourere da zul, memez en eost. He zantelez eo a jache davetan an eneou.

Guiskamant an den santel a veze atao dister, evit kaout muioc'hik a arc'hant da rei en aluzen. Distrei a reaz avechou d'ar gear diare'hen; he voutou hag he le-rou en deveze roet d'ar paour. Iun a rea aliez; dispenn a rea he gorf gant fouetou ha chadennou; n'en devoa evit guele nemet eun tamik kolo, hag aliez zoken e kouske var ar plench. Gant an dra-ze, ne zrebe nemet boued dister, lonedet pell a oa: dibri a rea ken nebeut euz ar boued fall-ze, heb morse an distera tam kig, ma 'z eo souez en defe gallet choum beo.

Dre druez ouz ar vinored paour, e reaz sevel eun ti a repu evit digemeret ar vugale. He oll zanvez, he labour hag he galoun a lakeaz evit sevel an ti-ze, ha Doue a ziskleriaz, dre verkou sklear, pegement e plije d'ezan he zervicher. Eun deiz, ne oa mui na lard, nag ed, nag arc'hant en ti, ar zant a iez da bardouma da vez sant Fransez Regis, hag a zigasaz relegou ar zant gantan d'ar gear. Lakât a reaz ar relegou santel er c'hriagnol: a benn antronoz, ar c'hriagnol a oa leun a ed.

En despet d'he zantelez, an Aotrou Vianney en devoue kalz poan da c'houzanv: ar falz-devodet ha tud ar bed a reaz brezel d'ezan; an diaoul hen tentaz e peb giz: an treac'h a joumaz gantan.

Ne oufe den niveri an dud a bep renk a deue da Ars, rak diredet a reat di euz a bep korn euz ar Frans hag euz meur a vro all, da c'houlen kuzul digant an den Doue, evit kaout peoc'h ar goustians. An Aotrou persoun a govesea epad c'houezek heur bemdez, hag a lakeaz eur maread pec'herien da zistrei da Zoue. Kendalc'her a reaz al labour skuizuz-se epad kalz bloaveziou, en eur ober miraklou braz: dek mil den ha tri-ugent, bep bloaz, a veze koveseat ganthan.

Eun devez, trec'het gant he boan, e kouezaz, a veac'h m'oa pignet en he gampr, hag antronoz ne c'hellaz ket mont d'an iliz. Choum a reaz klanv eur pennad, ha goude beza goulenmet ha resevet he zakramanchou, e laoskaz he huanad diveza, d'ar 4 a viz eost euz ar bloaz 1859, epad m'edot o lavaret ar pedennou-man: « Ra zeuio elez Doue d'he gerc'het evit he gas da

» Jerusalem an env. » Ar burzudou c'hoarvezet epad he vuez ha goude he varo a reaz d'ar pab Pie X hel lakât e renk an dud eüruz, d'an 8 a viz genver euz ar bloaz 1905: diskleriet eo bet sant gant Pie XI, d'an 31 a viz mae 1925.

SONJOMP ERVAD :

Ar beleg n'eo ket beleget evitan he-unan: ne ro ket an absolven evitan he-unan; evit ar re all eo e vez beleget. Lezit eur barrez ugent vloaz heb beleg, ar chatal a vezo adoret enni. Ar beleg en deuz savet ac'hanoump e renk bugale Doue dre ar vadiziant; ar beleg a neta hon ene e sakramant ar binijen, a vag ac'hanoump dre zakramant an aoter; pa vezo red kuitât ar bed-man, ar beleg a zigoro d'eomp dor ar baradoz. Bezomp eta leun a respet evitan, resevomp gant doujanz he gómzou, rak Hor Zalver Jesus-Christ en deuz lavaret, en eur gomz ouz ar veleien: « Neb ho selaou am zelaou; neb » ho tisprij, a zisprij ac'hanoun-me. »

AN DEKVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Laurans, Merzer

Sant Laurans a zo bet ganet er Spagn, met mont a reaz abred da Roum, hag eno ar Pab Sixt a zavas anezhan e renk an Avielerien. Bez' e veze da dosta d'ar Pab santel pa lavare an oferen, hag ingala a rea, euz he bers, an aluzennou d'ar beorien. Pa c'houre'hemen-naz an impalaer Valerian lakât ar gristenien d'ar maro, ar Pab Sixt a oue paket ha taolet er prizoun gant ar re genta.

Kerkent ha ma klevas ar c'helou, Laurans, en he vall da veza merzer, a redas d'ar prizoun. Lavaret a reaz en eur ouela: « Tad santel, penaoz e sonjit-hu mont d'ar

» maro heb hoc'h Avieler ? Betek vremen ho peuz
» goulskoude great d'in an honor da veza atao en ho
» kichen. »

Sant Sixt a zeuaz he galoun da denerât oc'h he glevet,
hag a lavaraz: « En em gonsolit, va mab, bez' o pezo
» ho koulen heb dale: it eta, ha rannit kenta ma c'hel-
» loc'h etre ar beorien tenzor an Iliz. » Sant Laurans
» ne gollaz ket he amzer; fiziout a reaz etre daouarn ar
gristenien, ar guiskamanchou oferen hag an arc'hantiri sakr,
mont a reaz gant an oll arc'hantiri a oa evit ar
beorien el leac'hioù ma oa kuzet ar gristenien. Ranna
a reaz etrezo, hed an noz, kement en doa, met en eur
bourvei da ezomou ar c'horf ne ankounac'hea ket an
ene: ho alia a rea da joum atao stard en ho feiz.

Antronoz, pa gase ar zoudardet ar Pab Sixt d'ar maro,
Laurans a redaz var an hent: « Tad karet, emezan,
» sentet em euz ouzoc'h, implijet em euz tenzoriou an
» Iliz hervez ho koulen. » Kerkent ha ma klevjont
hano euz tenzoriou, ar baianed a reaz kregi en Avieler,
hag he gas var eüm d'ar prizoun.

Antronoz all, ar zant a ziskleriaz e oa kristen ha ne
adorje biken an idolou, met Valerian a c'houlenmaz
digantan: « E pe leac'h ema tenzoriou an iliz ? — « Ro
» d'in tri devez, eme an Avieler, ha m'ho diskouezo
» d'id. » An impalaer, laouen braz o sonjal en doa ten-
zoriou da gaout, a roaz d'ezan an tri devez a c'houlenne.

D'an trede devez, Laurans a oa abred kaer dirak an
impalaer: « Ha da denzoriou? eme Valerian. — Setu
» hi ama, » eme an avieler. Hag e oue gulet o tostât
an oll beorien a veze maget gant an Iliz: tud kam, tud
dall, lor, seizet; eun druez e oa sellet outo oll.

An impalaer, kounar ennan ken a grene, a reaz
skourjeza ar zant, ha devi he gostou gant laonennou
houarn ruziet en tan. Ar merzer a bede: « Jesus, mab
» ar guir Doue, o pet truez ouz ho servicher, na fell ket
» d'ezan nac'h hoc'h hano. » O veza na fallgaloune ket,
ha ma choume heb klem, Valerian a lavaraz: « Kinnig
» ezans d'an idolou, pe me raio d'id divoaska poaniou
» ker braz, ma n'en deuz den gouzanvet goasoc'h. —

» Gant sikour va Doue, n'em euz nep aon rak ar boan:
» gra ar pezh a giri. »

Neuze e oue dispennet korf ar merzer gant fouetou
ploum, ar boan a oue ker skrijuz, ma kinnigaz Laurans
he ene da Zoue; met eur vouez a oue klevet o tont euz
an env: « Bez' oc'h euz c'hoaz da c'houzanv. » An impa-
laer a lavaraz neuze: « Eur sorser eo, sikour an diaoul
» en deuz, » hag e reaz asten ar zant var eus starn koat,
evit ma vije brevet he gorf. Ar vourrevien a ehanaz
da c'houde.

Dioc'h ar pardaez, Valerian a c'halvaz a nevez ar
merzer dirazan, hag a reaz asten anezan var eur c'hrill
vraz-vraz, glaou beo dindanni. An Avieler kalounek na
glemme ket, Doue a gennerze anezan. A benn eur pen-
nad, e troaz he benn varzu an impalaer, hag a lavaraz
d'ezan gant eur vouez seder: « An tu-ze a zo poaz
» aoualc'h, grea 'ta va zrei var an tu all ! »

Ar vourrevien a zentaz outan, kounnar enno; nebeud
amzer goude, e lavaraz adarre: « Poaz aoualc'h oun
» breman: debri a c'hellit, » hag e tremenaz, er bloaz
259.

En iliz kaer Sant-Laurans, e kichenik Roum, e veler
hag e c'honorer, hirio c'hoaz, ar c'hrill m'eo bet mer-
zeriet varni an Avieler kalounek.

SONJOMP ERVAD :

An oll n'int ket galvet gant Doue da vervel merzerien evel
sant Laurans, met an oll o deuz eur boan benag da c'hou-
zanv er bed-man, eur vech en amzer; ha gouzanv a rit-hu
ho poaniou a galoun vad?



AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ EOST

SANT LIGORI, ESKOP (1696-1787)

Ar zant-man zo ganet e kichenik Napl, er bloaz 1696. Sant Fransez a Jirolamo, o veza tremenet dre eno, a lavaraz d'he vam e vevche ar c'hrouadur betek he zek vloaz ha pevar-ugent, e vije eskop, hag e rajae kalz vad d'an Iliz. Keletnet mad e oue gant he vam var lezen Doue, hag ar bugel, dre he zentidigez a ziskouezaz abred ar garantez en devoa eviti. Tec'het a rea diouz ar plijadureziou, hag he vrasa plijadur, en he iaouankiz zoken, a oa mont da velet an dud klanv ha da adori Hor Zalver Jesus-Christ e sakramant he garantez. He spered a oa digor: ne oa e'hoaz nemet c'houezek vloaz pa oue resevet doktor.

Evit senti ouz he dad, Alphons a ieaz da alvokad; he zeskadurez a oue anavezet buan, hag euz a bep korn euz ar vro e teuet da c'houlouen kuzul digantan. Met ne zaleaz ket da zilezel ar garg-se evit en em rei oll da zervich Doue. He dad a glaskaz enebi outan en eur ziskouez d'ezan ar fortun gaer a oa ouz he c'hortoz er bed; met Alphons ne reaz van: red e oue d'he dad asanti d'he c'houlouen.

Eur vech beleget, he garantez evit he Zoue ha silvidigez an eneo ne reaz nemed kreski muioc'h mui. Labourat a reaz da zisc'hrizienna an techou fall euz a douez ar bobl, hag heb dale, e oue guelet e Napl eun niver braz a bec'herien o chench buez, o trei kein d'ho zechou direol.

Er bloaz 1732, Alphons a guiteaz Napl evit mont da zevel eun Urz misionerien hag a sklerijenfe an dud dister divar ar meaz. En Urz-se, koulz hag er peb brasa

euz an Urziou, ken goazed, ken merc'hed, e oa daou rum dud santel: lod anezho, desket mad, a dlle kelen ho c'henvroiz, great e vez Tadou anezho; lod all, nebeutoc'h a zeskadurez d'ezho, o deuz soursi gant an ti, ar bevans, hag al labourou pouner: great e vez Frered anezho.

Alphons a sklerijennaz kalz tud gant sikour he Dadou, lakeat e oa bet Superior var he Urz gant ar Pab Beneat XIV. Evit tenna bemnoz an Aotrou Doue var he labour, ar zant a bede kalz, hag a gastize he gorf dre ar binijen.

Eskop Santez Agatha ar Gothed o veza maro, Alphons a oue choazet evit dere'hel he blaz, en despet d'ar boan a gemeraz evit pellât dioutan eur garg ker pouner. Eur vech eskop, e kendalc'haz da veva ha d'en em viska en eun doare dister. Poania a reaz dre he brezegemmoù, dre he skridou, ha muioc'h e'hoaz dre he skouer, da entana er c'halonou karantez Jesus-Christ e sakramant an aoter. Bep bloaz e vele an hanter euz he eskopti. Bemdez e roe da zibri d'ar beorien, a zeue niveruz d'he balez, hag epad ar gernez vraz a zismantraz an Itali er bloaz 1764, e verzaz betek he voalen aour evit pourvei d'ho ezomou.

Daoust m'en doa nebeut a iec'hed, Alphons ne lezaz a gostez nikun euz oll deveriou he garg. O veza kouezet klanv, seizet he izili, e c'houlennaz kuitât he eskopti, ha var aotre ar Pab Pi VI, ee'h en em dennaz en ti en devoa savet evit he Urz. Eno e kendalc'haz da ren ar memez buez pinijennuz. Var fin he vuez, Doue a zigasaz kroaziou pouner d'he zervicher; tentet e oue en eun doare skrijuz gant an drouk-spered, tentet e oue zoken, daoust peger koz e oa, eneb ar burete. Koll a reaz ar c'hleved hag ive, koulz lavaret, ar gueled; met e kreiz he oll boaniou, e soublaz atao da volontez Doue. Mervel a reaz d'ar c'henta a viz eost euz ar bloaz 1787: bez' e oa dek vloaz ha pevar-ugent, dek miz ha pemp devez.

SONJOMP ERVAD :

Nag a boan a gemeraz sant Alphons evit kelen ha skleri-

jenna an dud a veve en he amzer! Sevel a reaz eun Urz beleien evit mont da brezeg d'ar boblou, evit ober d'ezo anaout Doue hag he garet. Hirio, koulz ha neuze, an dud o deuz ezom da veza sklerijennet var guirioneziou ar feiz. Ha poan a gemerit-hu da zeski hoc'h-unan ho relijion? Ha soursi oc'h euz gant ar vugale o deuz katekiz da zeski?

Ar zant-man, koz-koz dija, devot braz d'ar Verc'hez, mad da bedi ha da ober pinijen, a oue tentet goulskoude enep ar burete. Arabat eo d'eomp eta beza souezet mar bezomp tentet; bezomp atao var evez gant aoun na vefemp trec'het gant an dentasion.



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ EOST

Santez Klara, foundatourez Urz leanezed Sant Franses (1194-1253)

Santez Klara, ginidik euz eur famill a duchentil pinidik euz kear Assis, en Itali, e devoa a vianik eun devoision vraz meurbed; kavet e veze peurvuia var bennou he daoulin en he c'hampr: kounta a rea ar Pateriou gant meinigou bihan. Dougen a rea azalek he iaouankiz dillad euz ar re zistera, ha kastiza a rea he c'horf dre ar binijen.

O veza klevet hano euz ar vuez santel a rene sant Fransez e kouent ar Porsionkul, ez eaz d'he gaout evit deski gantan ar guella doare da zervicha Doue. An den santel a starteaz anezi er zonzj e doa d'ober veu da jom bepred guerc'hez, ha da zilezel ar bed evit servicha Doue hebken.

D'an oad a drivac'h vloaz, e kemeraz digant ar memez sant, en iliz Itroun Varia an Elez, sae ar binijen; lakeat a oue neuze en eur gouent leanezed. He c'herent souezet o klevet an nevezenti-ze, a glaskaz en aner he zenna dioc'h ar gouent. Eur c'hoar d'ez, o velet he nerz

kaloun, a ieaz d'he c'haout evit beva asamblez ganti an nemorant euz he buez, ha servicha Doue dindan ar memez reolen: hi ne oa c'hoaz nemet pevarzek vloaz. Eun toullad plac'hed iaouank, mam ar zantez he-unan hag he c'hoar ziveza, a gemeraz ive goude-ze ar memez sae a binijen. Setu aze penaoz eo bet savet Urz leanezed sant Fransez. Al leanezed-man a vev en eur baourentez vraz, hag a ro skoueriou kaer a binijen, a garantez hag a zantelez: hanvet int Klariss dioc'h hano ho foundatourez.

Ar Pap Gregor IX a rea ar brasa stad euz ar foundatourez santel. Kinnig a reaz d'ez, staga leve ouz he c'houent, met hi a lavaraz nan gant kement a nerz, ma veulaz ar Pab he fizianz e Doue. Guelet a rejot heb dale pegement e plije da Zoue ar fizians-se, rak eun devez, pa ne oa nemet eun dorz vian a vara evit lein, ar zantez a reaz rei an hanter anezi en aluzen, hag a rannaz an hanter all etre al leanezed, hanter-kant anezo. Ar bara a greskaz en eun doare ker burzduz, m'o devoue an oll ho goalc'h.

Urz leanezed sant Fransez a zo rust meurbed: gourc'hemen a ra bale diarc'hen, kousket var ar c'halet, iun epad ar bloaz, ha tevel bepred; choum heb guelet an dud dianveaz.

Ar zantez a zonzj d'ez, goulskoude ne oa ket aoualc'h kement-se: dougen a rea ouspenn eur c'houriz reun, hag epad ar c'hoariz e veve divar bara ha dour. En despet d'ar pinijennou-ze, Klara a lavaraz eun devez: « Abaoue m'en deuz roet Doue d'in ar c'hras d'en em » voestla d'ezhan, n'em euz kavet poan ebet rust da » c'houzany, pinijen ebet kaled da ober, klenved ebet » dies da zivoaska. Ah! emezhi, peger braz eo an » dousder a zanter, o c'houzany dre garantez evit » Jesus-Christ! »

Eun arme a Durked o veza deut dirak kear Assis, en esper he c'hemeret dre nerz, ar zantez a reaz dougen var ar mogerion ar zakramant meulet ra vezo; mont a reaz varlerc'h betek dor he c'houent gant al leanezed; o veza en em strinket oll d'an douar dirak Jesus-Christ,

e rejont ar beden-man: « Ne zilezit ket, Salver benniget, » ho servicherezed dister; n'o deuz ken souten neme- » doc'h, lakât a reont ennoc'h ho oll fizians. » Er me- » mez mare e savaz kement a spount etouez an Turked, ma 'z ejont oll kuit.

Erfin ar foundatourez santel-man, goude beza gouar- » net gant kalz a furnez he leanezed epad daou vloaz ha daou-ugent, a rentaz he ene da Zoue er bloaz 1253. O ren he zri-ugent vloaz edo.

SONJOMP ERVAD :

Pa fell d'eun den iaouank pe d'eur plac'h iaouank en em voestla da Zoue ha mont d'eur gouent, kerent ha mignouned a zeu raktal d'ho diarben ha d'ho dizalia guella ma c'hel- » lont: lavaret e vez d'ezo ober mad ho zonz evit gouzout ha galvet int, gant aoun ne zavfe keuz ganto re zivezat. Lava- » ret a reer d'ezo kemeret ho amzer, evit en em anaout guel- » loc'h. N'euz netra da rebech d'ar gerent e kement-man, gant ne ziarbennint ket re ho bugale. Met pa vez hano da gemeret eur stad henag er bed, pa vez hano da zimezi, petra lavar ar gerent, d'ho bugale? Netra peurvuia. Goulskoude e pehini euz an daou stad-se e kaver ar muia a riskl evit ar zilvidigez, ar muia a anken hag a geuz? Tadou ha mammou, evesait pegen pouner, pegen riskluz eo chench stad a vuez, rak-se eo dleet d'eoc'h lavaret d'ho pugale goulen sklerijen digant Doue, abarz trei tu pe du. Neuze dreist oll e tleit kaout sonj eo ho pugale da Zoue araok beza d'eoc'h-hu.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Jermen, Eskop Auxerr

Ar zant-man a oue, da genta alvokad; brudet e oa da gaout eur spered lemm ha da veza eun den helavar, setu perak e oue lakeat da c'houarn kear Auxerr. Eun devez Doue a ziskleriaz da Amator, eskop ar gear-ze, e teuje

Jermen da ren an eskopti var he lere'h. Amator ne joumaz ket da varc'hata; goure'hemen a reaz d'ar gouarner: « En em lakit e stad da reseo an Ursiou sakr. » Ar gouarner a oue souezet meurbed o klevet eun dra ken estlamuz, ha n'en devoa mui da c'houde nemet eur zonz, en em zantelât dre an oberou mad. Goude maro sant Amator, e oue lakeat da eskop en he leac'h.

Ar zant, evit tenna bennoz an Aotrou Doue var he eskopti, a renaz, divar neuze, eur vuez a binijen hag a vadelez muioc'h e'hoaz eget araok. Rei a rea he vadou d'ar beorien ha d'an ilizou; na zebre nemed bara heiz; dougen a rea, hanv e'hoanv, eur porpant reun. Kriste- » nien an eskopti, o velet buez santel ho fastor, a ieaz var vellât ho-unan.

En amzer-ze, eun heretik, Pelaj, a skigne he greden- » nou faoz e Roum: nac'h a rea ar pec'hed orijinel, prezeg a rea ar gaou divar benn gras Doue. O veza ma oa ginidik euz a Vro-Zaoz, kalz tud eno a lenne he gente- » liou, hag a dec'he divar hent ar virionez. Ar Pab Seles- » tin hag eskibien Frans a gasaz da Vro-Zaoz sant Jer- » men ha sant Loup, eskop Troyes, evit sklerijenna ar gristenien-ze.

An daou zant a reaz mad ho labour: ho frezegennou hag ho miraklou a reaz d'an dud anaout ar virionez: ar peoc'h a renaz eur pennad er vro da c'houde.

Gant an amzer, an heretiked a zavaz adarre ho fenn, ha pa glevaz kement-se, ar zant a zistroaz da Vro-Zaoz gant Sever, diskibl sant Loup. En dro-man, e reaz adarre d'an heretiked rei peoc'h, hag evit miret outo da zevel ho mouez hiviziken, ar zant a genteliaz mad Iltud hag eun nebeut tud gouizieg, hag a lavaraz d'ezo: « Sa- » » vit skoliou ama hag ahont, dre ar vro. »

Sant Iltud, hag ar iaouankiz a oue skoliet gantan, a zalc'haz mad atao d'ar guir feiz, an dud sklerijennet ganto a viraz ne zeuje ar gristenien da rei skouarn da brezegerien ar gaou. Sant Iltud ha meur a hini euz he ziskibien a deuaz divezatoc'h da Vreiz-Izel, hag a bre- » zegaz ar feiz kristen d'hon tud koz: sant Jermen eo en deuz eta, dre he ziskibien, sklerijennet anezo.

Achu he labour gantan e Bro-Zaoz, ar zant a zistroaz da Auxerr.

D'ar mare-ze, tud Breiz-Izel a oa en em zavet enep ar Romaned, met trec'het e oant bet. Ar pennou braz a deuz aoun d'ezo na vijent kastizet re galed, hag a 'z eaz da c'houlen sikour digant sant Jermen: an eskop madelezuz a redaz dioc'htu da gaout jeneral ar Romaned hag a lavaraz d'ezan: « Gortozit araok kastiza, me a 'z a » da c'houlen pardoun digant an impalaer. » Ar zant a iez kercent da Raveenn.

An impalaer a reaz kalz stad anezan: rei a reaz d'ezan ar c'hras m'oa deut da c'houlen evit ar Vretou-
ned. E Raveen ar brizounerien en em erbedaz ouz an eskop santel, eun devez ma tremene abiou d'ar prizoun. Skei a reaz var an or, met den na zeuz d'he digeri d'ezan. Neuze ar zant a reaz eur beden da Zoue, ha kercent an or a zigoraz anezi he-unan. Mont a reaz dioc'htu gant an oll brizounerien da gaout an impalaer, ha goul-
len a reaz ar frankiz evito. An impalaer, o velet ar burzud, a laoskaz anezo oll da redet.

Eur vech all an eskop karantezuz-man a zigouezaz gant eun den paour ha koz, gantan eur beac'h pounner var he chouk. Eur ster a oa da dreuzi, hag ar paour kez den ne grede ket riskla he vuez. Dre druez outan, ar zant a gemer ar beac'h, hag hen doug en tu all d'ar ster; distrei a reaz, goudeze, da gere'hat ar c'heaz koz, hag hen dougen a ra ive en tu all d'an dour.

Erfin, goude eur vuez santel, an eskop karantezuz a iezaz da reseo he gurunen er bloaz 448: d'he eiz vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Sant Jermen en deuz great en he vuez kalz burzudou, met ive, karet en deuz kalz ar binijen. He vevans a oa paour; he humilite, he vadelez, he garantez a oa bras: prest e vezo atao da zikour an oll. Dre ar vertuziou-ze en deuz douget he dud da garet Doue. Pegement a vad na rafemp-ni ket m'hor befe ar vertuziou-ze ive!

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ EOST

Santez Athanasii

Ar zantez-man a oa ganet er Gres, var dro ar bloaz 800. He zad hag he mam, tud a feiz, a lakeaz ho oll zoursi da rei d'ezi eun deskadurez kristen, hag ar vere'h a zalc'haz sonj mad atao euz ar c'henteliou e devoa bet.

D'an oad a zeiz vloaz e c'houie dindan envor meur a beden ha buez meur a zant pe zantez. Kaout a rea d'ezi e oa an dillad kaer, traou vean ha dizoare; ha plijadureziou ar bed, ebatou divlaz hag inoüuz.

C'hoant braz e devoa d'en em voestla da Zoue, met he zad hag he mam ne felle ket d'ezo, hag a reaz d'ezi dimezi gant eun den vertuzuz. Athanasii en em glevaz meurbed gant he fried, hag hen he laoskaz atao da heuil he devosion. Neuze ec'h en em lakeaz da voda en he zi da zul ha da c'houl ar gragez hag ar merc'hed iouank divar-dro; lenn a rea dirazo eur pennad euz eul leor devot benag, ha goudeze, epad eun tammik amzer e komze ganto divar benn traou santel. He vertuziou a blijaz kement d'he fried, ma lavaraz kenavezo d'ar bed, evit mont da zervicha Doue d'eur gouent.

Netra ne vire mui ouz Athanasii da gas da benn ar zonzj e doa abaoe pell amzer, mont da leanez. Kalz merc'hed hag intanvezed o doa c'hoant mont da veva asambles ganti ec'hiz en eur gouent leanezed. Ar zantez a asantaz gant eur joa vraz hag a lakeaz he zi d'ober kouent. An oll merc'hed-se a deuas eta di da joun, hag a renaz eur vuez devot: reizet e oant var hent ar zante-
lez gant eur beleg gouiziek, hag a roaz d'ezo goel al leanezed.

Choaz a rejont Athanasii evit ho zupierez, en despet d'ezi. Pa oue zupierez, Athanasii a zonzje d'ezi e tlie beza an humpla hag ar vella da zervicha ar re a oa en em lakeat dindanni. Ober a rea bepred he-unan al

labourou distera ha poanusa euz an ti, ha pa lavare d'ezi he merc'hed n'o doa ket he choazet evit beza plac'h ar gouent, e respounte: « Kaera a gavan en eur » zupierez, eo gellout ober an traou distera. »

Kastiza a rea he c'horf dre binijemou rust, ha peurluvia ne gouske nemet var eur gador. He brasa plijadur a oa kaozeal gant he C'hoarezed var ar grasou dispar roet da Vam Doue, hag eur c'hoant braz e doa da vervel dere'hent unan benag euz goueliou ar Vere'hez. He goulenn e devoue.

Klenvel a reaz d'an dri a viz eost, hag en devez-se, Doue a ziskleriaz d'ezi n'e doa mui pell da vev. Kredi a rea stard e tlie mervel dere'hent gouel Maria-Hanter-Eost, ha ne ehanaz da bedi ha da zonzal er baradoz betek an devez-se. Lavaret a rea d'he C'hoarezed eur vech er mare: « Kanit bepred meuleudiou an Aotrou Doue, » ha pedit anezan heb paouez, da veza trugarezuz en » hor c'henver. »

D'ar bevarzekved devez euz ar miz, e c'halvaz var he zro an oll C'hoarezed: o velet anezi toc'hor, ar re-man a zirollaz da lenva ha da grial-fors. Ar zantez a lavaraz d'ezo: « Ho kuitât a ran, va C'hoarezet keiz, met fizians » an euz hor bezo digant an Ao. Doue, leun a drugarez » ar c'hras d'en em gaout oll eun devez er baradoz. Ho » pedi a ran da zervicha bepred an Aotrou Doue gant » ar memez karantez; en em glevit etrezoc'h, hag en » em garit an eil eben. Varc'hoaz ema gouel Maria- » Hanter-Eost: na zirenkît netra en ofisou abalamour » d'am maro, met kanit egiz kustum ar gouel kaer-ze, » ha goude sebeillit va c'horf; bezit sonj ac'hanoun en » ho pedennou. »

Goude ar c'homzou-ze e sarraz he daoulagad, hag e rentaz he ene d'he C'hrouer. Den na c'houie e oa maro, rag an oll a grede edo o pedi. Ar sked a baraz var he bîzach a roaz da anaout e oa nijet he ene d'ar baradoz. (860).

SONJOMP ERVAD :

Athanasi, d'an oad a zeiz vloaz, ouie dindan envor meur a orezon zevot, ha buez meur a zant. Petra a oar ar

vugale a vrema d'an oad-se? Traou goulo ha difoun, divar benn ar c'hoariou, divar benn ar bed; netra, koulz lavaret, divar benn Doue, divar benn an ene. Setu aze ar c'henta tra a zesker d'ar vugaligou; n'eo ket souez ma veler nebeut a zevosion hag a relijion etouez ar re iaouank.

Kerkent ha ma c'hell eur c'hrouadur balbousat eur ger benag, ha dre ma teu he spered da zigeri, ar vam a dle deski d'ezhan he Bater a nebeudou, hag he sklerijenna var guironeziou brasa ar relijion gristen.

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ EOST

Gouel Maria-Hanter-Eost



Ar Vere'hez Vari a zo bet savet en env korf hag ene: an oll gristenien vad a gred kement-se; an Iliz n'e deuz ket goulskoude diskleriet, evit c'hoaz, e tleomp her c'hredi dindan boan da veza daonet.

O veza ne gomz ket ar Skritur Zakr divar benn maro ar Verc'hez Santel, kement a verkomp er gentel-man, a zo bet tennet divar skridou ar zent, pe ar skrivanierien devot d'an Itrou Varia.

Ma choumaz ar Verc'hez meur a vloaz er bed-man, goude ma oa savet he mab en env, n'oa nemet evit rei komfort d'an Ebestel ha d'ar gristenien, evit beza ho zikour, ho skoazel. He buez a zo bet ar skouer euz ar garantez kaera hag euz an oll vertuziou; he buez penna-da-benn a zo bet eur beden. Mont a rea aliez da velet al leac'hion a oa bet santelleat gant he mab, mont a rea dreist oll d'al leac'hion sakr a oa bet test euz he Basion hag euz he varo.

He c'horf a oa var an douar, met he c'haloun ne oa ket dispartiet diouz hini he mab; he brasa mall a oa beza gantan evit atao.

Pa dosteaz evithi ar mare da vont euz ar bed-man, eun eal a ziskleriaz d'ezhi deiz hag heur he maro. Ar c'helou-ze a reaz d'an Ebestel ha d'an diskibiien en em voda buan e Jerusalem evit lavaret kenavezo d'ho mam benniget, ha kaout diganti he bennoz diveza. Goude beza diskleriet e defe atao sonj anezo, ha goude beza ho aliet da joum stard en ho feiz, he ene a zispartiaz diouz he c'horf heb poan nag anken. Er memez amzer e oue gulet en dro d'ezi eur sklerijen, skedusoc'h eget hini an heol, hag e oue klevet kan dudiuz an elez.

An Ebestel ha kement hini a oa var al leac'h en em strinkaz d'an douar eharz he zreid, oc'h ho goalc'hi gant daelou a c'hlac'har hag a levenez asambles; kristenien Jerusalem ha divar dro, a deuz gant hast da henori ar c'horf santel; hen enterri a rejont gant kalz a respet e Jetsemani, tri c'hant kammed dioc'h Jerusalem.

Tri devez goude, evit plijout d'an dud n'o devoa ket bet an eurvad d'en em gaout e kichen ar Verc'hez parentaz he ene d'he Doue, e oue digoret ar bez, met an oll a jomaz souezet, rak ne oue kavet ennan nemet al linseriou o doa servichet da zebelia ar c'horf santel.

Renta a rejont oll gloar da Zoue, abalamour ne oa ket falvezet gantan e choumje eur c'horf ker pur da vreina e kaloun an douar. Laouen e oant c'hoaz, abalamour ma oa plijet gant Doue ober da gorf he vam zantel sevel euz a varo da veo araok ar varn ziveza, hag hen reseo gant honor er baradoz.

Ar gouel-man a zo bet bepred unan euz ar re vrasa en Iliz. Lavaret a c'heller eo deuet c'hoaz da veza kaeroc'h e Frans, abaoue m'en deuz ar roue Lois XIII, er bloaz 1638, choazet an devez-se evit en em voestla hen heunan hag he rouantelez a bez d'ar Verc'hez Gloriuz Vari. Setu perak, e reer hirio, dre oll rouantelez Frans, prosessionou kaer. Dre ar pedennou-ze en hano ar vro, hor rouaned a ziskoueze dirak an oll e oant sujidi an Itrou Varia, hag ec'h anavezent anezhi evit ho rouanez hag ho alvokadez er baradoz.

SONJOMP ERVAD :

Ar Verc'hez sakr a zavaz euz a varo da veo tri devez goude he maro; eur c'horf ker santel, a oa bet furnet anezan korf Jesus-Christ, ne dlie ket choum da vreina e tenvalijen ar bez. Hor c'horf d'eomp ni a zavo ive euz ar bez eun deiz; met evit beza eüruz pe reuzeudik da viken eo e vezo? Den n'her goar; eun dra a ouzomp evelato: mar kendal-c'homp da veza guir zervicherien Mari, na c'hellimp ket mont da goll.

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ EOST

SANT JOACHIM

Mar karit an Itrou Varia, henorit sant Joachim, he zad, ha trugarekait an Aotrou Doue da veza roet d'ezan grasou ker kaer. Mar d'eo eun honor evit eun tad kaout eur c'hrouadur fur, evel ma lavar d'eomp ar Skritur Zakr, pe seurt gloar a c'hell beza lakeat e kemm

gant hini ar zant-man, en deuz meritet dre he zantelez beza choazet gant Doue, dreist an oll batriarched all, evit beza tad ar Verc'hez Vari, ar zantela hag ar barfeta euz an oll grouadurien ?

Joachim a oa ginidik euz a gear Nazareth, ha disken a rea euz lignez ar roue David; met he familh a oa deut da veza paour gant an amzer, rak Doue a felle d'ezan e teuje he Vab da c'henel ha da vervel er baourentez.

Biskoaz ne oa bet gullet eun den humploc'h, dou-soc'h, pasiantoc'h, devotoc'h eget Joachim, meulet e oa gant an oll, abalamour d'he vadelez ha d'he aket da bedi.

Joachim a zimezaz da zantez Anna, ar vertuzusa merc'h a oa neuze var an douar. Biskoaz dimezi ne oue eürusoc'h, biskoaz ne oue gullet eur garantez vrasoc'h etre daou bried: an eil a rea eürusted egile. Evel ne glaskent nemet plijout da Zoue, ha kaout an eurvad da velet ar Messias ma oa ar bed var c'hed anezan abaoue keit all a amzer, e tremenent ar pep brasa euz ho buez o pedi hag o vedita. N'o doa ket a vugale, ha n'edont mui en oad da gaout anez eur burzud. Doue a reaz ar burzud-se evitho. Ar verc'h o devoue a dlirenta eüruz ar bed oll, ha beza gloar he familh hag he bro.

Sant Joachim, oc'h anaout an tenzor presiuz fiziet ennan, a drugarekeaz Doue. Dre anaoudegez vad e tenaz, kerkent ha m'e devoue ar Verc'hez santel tri bloaz, d'he goestla da zervich Doue en Templ: rei a reaz a galoun vad d'an Oll-C'halloudeg ar c'hrouadur a rea he eüruset er bed-man. Goude e tremenaz an nemorant euz he vuez o pedi, hag o veuli noz-deiz madelez an Aotrou Doue.

Erfin ar Patriach santel-man, pa oa eur pevar ugent vloaz benag, a rentaz, leun a veritou, he ene d'he Grouer, etre divrec'h santez Anna, ha re he verc'h santel.

Diskouez a reer c'hoaz hirio bez sant Joachim d'ar re ia da bardouna d'an Douar Zantel, en iliz ma veler enni bez sant Joseph hag hini santez Anna, e traonien

Josaphat. Eno ive eo bet sebeliet an Itroun Varia, evel m'eo bet diskleriet deac'h.

SONJOMP ERVAD :

I. — Henoromp ar Familh Zantel a Jesus, Mari, Joseph, Anna ha Joachim, ha bezomp devot d'ezi. Goulennomp ma reno peoc'h Doue en hon tiegeziou. Tadou ha mammou, goulennit ar furnez da c'houarn hervez Doue ho familh hag ho tiegez; bugale ha servicherien, bezit leun a zoujans, a zentidigez evit ma reno an urz vad hag ar peoc'h en ti.

Oh! nag eüruz int, tud eun tiegez reizet mad! Eun dudi eo beva etouez ar seurt tud-se, rak ar garantez a ren e kalonou an oll. Er c'hountrol, eun ifern eo beva en eur familh a dud difeiz: ne gaver eno nemet trouz ar brezel, kounnar ha rann-galoun. Doue na skuill he vennoz nemet var an tiegeziou a zo enno doujans evitan; ar re all a ia var zisterrât.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Hyasint, Manac'h

(1185-1257)

Ar zant-man, ganet er Pologn, a dremenaz he iaouankiz en eur burete vraz.

Eur vech deut da veza desket brao, e resevaz an Ursiou Sakr. Hanvet e oue chaloni, ha bez' e oue eur skoner evit an oll epad an offis santel; an nep her guele o pedi ker c'houek a veze douget buan da bedi ive. Rei a rea d'ar beorien an darn vuia euz he zanvez.

O veza m'en doa sant Dominik nevez savet eun Urz kaer, Hyasint a c'houlemmaz beza digemeret ennan. Ar foundatour santel hen resevaz evel pa vije bet digaset d'ezan euz an env, hag o velet he skiant hag he vertuz, her c'hargaz dizale da brezeg an Aviel. Souezuz eo ar frouez a zougaz he brezegenou.

Ar vuez santel a rene eo a rea d'ezan gounit kement a eneoù da Zoue. Bep guener e iune divar bara ha dour, kousket a rea peurvuia var an douar noaz, ha tremen a rea alies ar peb brasa euz an noz en iliz, dirak ar Zakramant ha dirak aoter an Itroum Varia. Epad he vuez pem da bem, en devoue evit ar Verc'hez eur garantez tener. Daoust ma prezege aliez, e kavaz goulskoude amzer aouale'h da zavel pemp kouent. Lakât a reaz er re-man relijiuzed a zoujanz Doue.

Goude beza labouret gant kement a frouez er Pologn, e lakeaz en he zont mont da brezeg an Aviel d'an Norvej ha d'ar Moskovi. Gounit a reaz er broiou-ze eun niver braz a eneoù da Zoue ken dre he brezegennou, ken dre ar miraklou a rea e pep leac'h.

Epad m'edo e Kiovi, an Tartared, tud gouez ha kriz, a generaz kear dre nerz; ober a rejont ho freuz hag ho reuz emmi; ne velet nemet tan ha goad e peb leac'h. Ar zant, gant aon rak ar sakrilachou, a gemeraz ar zakramant meulet ra vezo, evit tec'het ganthan. Pa oa o vont ebou da imach ar Verc'hez en iliz, ar skeuden a gomzaz dre vuzud: « Penaoz, Hyasint, savetei a rez ar mab, hag e laoskez ar vam! » Ar zant a grogaz kerkent er skeuden zantel, hag a zougaz eaz anezhi, daoust ma oa pouner, gant an hostiou sakr. Digouezout a reaz var ribl eur ster vraz: ne oa eno na pount na bag. Leun a fizianz e galloud an Hini a zouge, hag e sikour ar Verc'hez Vari, Hyasint a gerzaz var an dour evel pa vije bet var ar c'haled.

Ar zant bras-man, goude beza labouret gant kement a nerz kaloun evit gounit an eneoù epad tost da zaou-ugent vloaz, a oue skoet erfin gant ar c'hlenved. Mont a reaz goulskoude, daoust ma oa klanv braz, da offis an Iliz da c'houel Maria-Hanter-Eost, hag er memez devez, goude beza resevet he zakramanchou diveza, e rentaz he cne santel da Zoue, er bloas 1257, pa oa en he zaouzek vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Mar deo eüruz an nep a zeu da c'hounit eun ene hebken

da Zoue, pegen eüruz ne vezo ket an hini en devezo gounezet d'ezan ken aliez a ene ha sant Hyasint! Karomp hon nesa, goulennomp dre hor pedennou ma raio he zilvidigez, ha sikouromp anezan hervez hor galloud. Roomp d'ezan skouer vad da viana, ma ne c'hellomp ket ober muioc'h.

Diouallomp, dreist oll, ne golfemp ene hon nesa dre eur goall ali pe dre skouer fall. Na goasa tra! Penaoz rapari eun drouk ker braz?

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Rok

(1295-1327)

Ar zant-man, ganet e Montpellier, er bloaz 1295, a oue en he iaouankiz, eur skouer euz an oll vertuziou. N'e oa nemet ugent vloaz pa gollaz he dad hag he vam. Ar re-man a leze gantan madou braz, met ar zant a glaske eun heritach all kaeroc'h. Ranna a reaz eta he vadou etre ar beorien, goude-ze e kemeraz guiskamant ar bardounerien, hag e skoaz hep gouzout dare da zen, etrezek Roum, evit mont da bedi var beziou an Ebestel sant Per ha sant Paol.

En eur dremen dre gear Aquapendant e klevaz edo ar vosen eno, hag e varve kalz tud. Ar zant a reaz he zont dioc'htu da vont var dro ar re a oa taget gant ar c'hlenved-se, e riskl da veza he-unan tizet. Lavaret e oue d'ezan ne dlle ket eun den ker iouank hag hen en em lakât e tro da baka eur c'hlenved ker speguz. Ar zant a respountaz: « Eüruz e vefen mar tigouesfe ganen » rei va buez ez-iaouank dre garantez evit va Zalver, » maro evidon p'edo e kreiz he vrud. » Doue a vennigaz eur garantez ker braz; a veac'h ma oue en em gavet etouez ar re glanv, mac'h ehanaz ar c'hlenved e kear.

O veza klevet goudeze e rea ar memez klenved eun

distruj spountuz e kear Sezeen, e redaz di dioc'litu. Diskouez a reaz eno he garantez evel araok, hag ar pezh a oa digonezet en Aquapendant, en em gavaz ive e Sezeen: ar c'hlenved a dec'haz adarre dirazhan.

An holl a c'hoantea guelec ar pardonner santel, ha meur a hini a zonzje d'ezo e tlie beza eun eal euz an env.

Euz a Zezeen Rok a'z eaz da Roum; goude beza pedet a vir galoun var beziou an ebestel, e kuiteaz kear, hag ee'h en em lakeaz da veva divar an aluzen. Edo o treuzi eur c'hoat pe gouezaz klanv braz. Red e oue d'ezan gourvez var an douar, ha choum eno, heb den ebet d'he zikour: met Doue n'hen dilezaz ket. Ober a reaz d'eur c'hi digas d'ezan eur bara bemdez, ken e oue e stad da vont adarre gant he hent.

Digouezout a reaz erfin en he vro; met den ne anavezaz anezan, ker paour e oa guisket, ha ker chenchet oa a hent all gant ar skuisher. Kemeret e oue eta evit eur spier, ha kaset dirak gouarner kear.

Hema ne anavezaz ket ken nebeud ar zant, petra bennag ma oa niz d'ezan. Goulen a reaz digantan he hano, hag euz a he vro e oa. Ar zant, renet gant Spered Doue, c'hoant d'ezan da veza dianavezet ha disprijet, ne respontaz grik da c'houlou ebet. Ar gouarner a reaz he deuler er prizoun, da c'hortoz ma c'houfe piou e oa.

Rok a oue eüruz da veza bet digemeret evelse en he vro; ne ehane na noz na deiz da bedi ha da veuli Doue en he brizoun. Eno ee'h en em gave e kreiz an denvalijen, hag en dienez euz a bep tra, met ne gave ket d'ezan goulskoude e oa poaniuz aouale'h he stad, rak kastiza a rea c'hoaz he gorf dre galz a binijennou all. Erfin, goude beza gouzanvet an dismeganz-se epad pemp bloaz, e varvaz en he brizoun var dro ar bloaz 1327, d'an oad a zaou vloaz ha tregont.

Goude he varo, e oue anavezet dioc'h eur gleizen en doa var he gorf abaoe m'edo var an douar. He contr, gouarner kear, a reaz sevel eun iliz en he hano. Meur a gear a ra bep bloaz eur gouel braz en honor da zant Rok, lod evit he drugarekât da veza pelleat eur c'hlenved speguz benag dioutho, ha lod all evit ma vezint diouallet dre he bedennou.

SONJOMP ERVAD :

Nag a virit en deuz bet ar zant-man? Dre garantez evit Doue, eo deut da veza servicher an oll; plijout a reas kement da Zoue, ma tec'he ar vosen dirazan.

Ha ni, ha karet a reomp-ni hon nesa e guirionez? Ha mont a reomp-ni da velet ar re glanv? Ha sikour a reomp-ni, hervez hor galloud, hon amezeien ezomek? Kaer eo guelec ar pinvidig o rei eur guenneg da gement paour a zeu da doull he zor, kaeroc'h eo guelec eur mestr o sikour he verour koezet klanv, eun tiek o sikour he amezeg re veac'hiet: eur vad, great gant skiant, a c'hell miret euz eun tiad tud da vont da glask ho boued.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ EOST

SANT IAN EUD

(1601-1680)

Tud an Tad Eud a oa choumet dizher epad tri bloaz, hag a reas vœu da vont da bardouma da iliz Itroun Varia a Rekourans m'o devije eur c'hrouadur. Ar Vere'hez a roaz d'ezho ho goulen; c'houec'h krouadur all o devoue goude ar c'henta, an hini a oue an Tad Eud.

Ar paotrik a oue savet mad gant he vam, ha poania a reaz abred da heuil kenteliou an Aviel. Eur paotr all a zistagaz ganthan eur javedad, pa n'en doa c'hoaz nemed nao bloaz, met Eudik a ginnigaz kerkent he eil ehod, en eur lavaret: « Sko var an tu all ive, mar kerez. » Egile, e leac'h skei, a c'houlennaz pardoun digant Eud.

Pa oue achu he studi ganthan, en he vro, en Normandi, an den iaouank a reaz he zonzj da vont da veleg, var ali he govesour. He dud a ginnigaz d'ezhan eur vere'h euz ar re fura evit mont da zevel tiegez, met Eud a res-

pountaz : « Da veleg eo em eus souj mont. » An tad a enebaz, hag a reaz rebechou e'houero d'he vab.

Pa ieaz ar paotr iaouank da c'houlen kounje ha bennoz he vam, hi ne roaz ken respount d'ezhan nemet he daelou. Rannet he galoun, Eud a 'z eaz d'ar marchosi, a zavaz var eul loan skanv, hag a dec'haz diouz ar gear: « En doare-man, emezhan, e c'hellin kerzet didrouz. »

A benn m'en devoue great teir leo bro, al loan a joumaz a zav, ha na reaz van euz an taoliou a roaz d'ezhan he vestr iaouank. Hen-man a ententaz neuze eun dra : « Doue a fell d'ezhan ez afen kuit gant bennoz va zud. » Distrei a reaz eta d'ar gear, ha na 'z eaz da Paris da achui he studi, nemed goude m'en devoue bet asant he dad hag he vam. Beleget e oue e Paris, er bloaz 1625, pa oa pevar bloaz var 'n ugent, ha lavaret a reaz he oferen genta, en eur grena eun tamik, da c'houel Nedelek, rak diskleriet en deuz: « An oferen a zo eun dra ker braz ma c'houlente, da zonzal ober mad, teir eternite: eun eternite araok, evit beza santel d'he lavaret, eun eternite epad m'hel lavarere; eun eternite da c'houde, evit trugarekât an Aotrou Doue evel m'eo dleet. »

En amzer-ze, ar vosen a dagas an dud e bro ar zant, hag ar re glanv a varve dioc'h an druill. Ar beleg yaouank a redas buan da entent ouz he genvrois, hag a roaz ho zakramanchou diveza d'eur c'halz anezho. N'en doa neb aon rag ar maro, met na oue ket taget he-unan. Evelato, krena a reas an darsien eun nebeud deveziou, met para a reas.

Neuze, gant truez ouz an dud o oa dizesk bras var ho relijion d'ar mare-ze, ez eaz da ober missionou, dre an Normandi a bez. An den santel Mikeal an Nobletz hag an tad Maner n'o doa ket roet c'hoaz ho missionou e Breiz-Izel. Ar missionou-ze o deus great eur vad bras en Normandi koulz hag en hor bro.

An tad a labouraz a-unan gant beleien an Orator (*Oratoire*) epad eun nebeud bloaveziou, met kuitât a reaz ar veleien zantel a oa en Orator evit sevel he-unan eun Urz nevez a relijiuzed dindan an hano a Urz Jesus ha Mari. An Urz-se a ves hanvet breman Urz an Eu-

disted dioc'h hano an Tad en deuz he zavet. Abalamour ma oa nebeud a gloerdiou pe Zenineriou en amzer-ze, an Tad en doa c'hoant sevel he Urz evit rei mistri guiziek d'ar glouer yaouank.

C'hoant en doa, ousspenn, da gas beleien euz he Urz da rei missionou d'an dud o doa nebeud a anaoudegez euz ar relijion gristen, var ar meaz dreist oll. An Urz a zo bet savet gant an Tad Eud a ra al labour a zo bet merket d'ezhan gant he rener kenta, met goulennet euz bet digant he vugale ren skoliou kristen, setu ma reont vad d'an Iliz e meur a zoare.

An Tad eüruz Eud en deus kelennet ar gristenien var an devosion da Galon Zakr Hor Zalver Jesus-Christ, pell araok santez Mac'harit Mari. « Pa honoromp Kalon Hor Zalver, eme ar zant, e c'honoromp da genta ha dreist peb tra, he garantez heb muzul. »

An den eüruz Eud a lavaraz er bloaz 1648, an oferen en honor da Galon Zakr Hor Zalver, en iliz veur Autun, prestik goude ma oa ganet Mac'harit Mari Alacoque, an hini a zo lakeat breman gant an Iliz e renk ar zentezed. Nebeud amzer goude, an Tad a zave eur Vreuriezh dindan goard Kalon Zakr ar Vere'hez Vari, gant eun Trede Urz en he honor.

An Tad a zisklerie alies d'an dud, en he brezegennou, karantez dispar Mab Doue evidomp, met lavaret a reatao ar virionez dispount ha difazi. Eun devez, epad ma prezege da leanezed ar Zakramant meulet ra vezo, e Paris, ar rouanez a deuz en iliz. Ar zant a lavaraz kerent: « Ar brinsed hag ar rouaned o deuz guir da gemeret eun tamik ebad, evel an dud all; met mar bezont hed an holl deveziou hag hed ho buez o redet an ebatou, n'emaint ket var hent ar baradoz. »

An dud a lez a oue drouk braz emmo, pa glevjont ar c'homzou-ze, rak e leac'h kaout soursi euz ho zud ha sikour anezho en ho ezomou, e kasent ho amzer o c'hoari hag o chaseal, met ar rouanez a ziskleriaz d'ezho krak ha berr: « Ar prezeger en deuz lavaret ar virionez, renomp hor buez dioc'h he lavarou. »

An den santel Eud a varvaz d'he naontek vloaz ha tri-

ugent, d'an 19 a viz eost 1680; diskleriet eo bet sant gant an Tad santel ar Pab Pi XI, d'an 31 a viz mae 1925.

SONJOMP ERVAD :

N'eo ket aoualc'h meuli ar zent abalamour d'ho vertuziou, red eo poania da zispenn ho roudou. Devosion bras ar zant-man a zo bet he garantez evit Hor Zalver: henoret en deuz, gant ar re genta, he Galon Zakr, henoret en deuz c'hoaz anezhan e sakrifis santel an oferen, guir garantez en deuz bet evit he nesa abalamour d'Hor Zalver. Hag henori a rit-hu ar Galon-Zakr, evel m'eo dleet? Ha mad oc'h-hu da gaout oferen?

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ EOST

Sant Bernard, Abad

(1091-1153)

Sant Bernard, ganet er Bourgogn, er bloaz 1091, a oue goestlet da Zoue gant he vam, kerkent ha ma teuz er bed. Doue a roaz d'ezi seiz krouadur; met en desped d'ar zoursi a gemeraz d'ho zevel oll hervez Doue, e poaniaz dreist peb tra da gelen ervad Bernard, evit ma e'helpa beza, eun deiz, eur beleg santel. Ar zant-ma a oa, a-vianik sentuz ha mad da bedi; goulen a rea digant Doue na deufe morse da zaotri he ene dre ar pec'hed.

D'an oad a bemzek vloaz, Bernard a gollaz he vam. Evel m'en devoa gened, merc'hed divergont a glaskaz he zougenn d'ar pec'hed; an den iaouank a oue treac'h d'ezho, met o velet e kavje tentasionou er bed, e sonjaz en em denna en eur gouent. He vreudeur a glaskaz he dizalia; e leac'h kaout an treac'h, int-hi eo a oue treac'h gant hag a heuliaz anezan d'ar gouent. Ho breur

iaouanka, choumet var ho lere'h, a ieaz ive, deut en oad, da zere'hel kompagnunez d'ezo.

Gant eun nebeut tud iaouank, gounezet ive gantan, Bernard a c'houlennaz beza resevet e kouent Sito. Sant Stephan, abad ar gouent, ho digemeraz gant joa. Neuze Bernard a labouraz d'en em zantelât; hag, evit miret na deufe da laoskât e servich Doue, e lavare aliez ennan he-unan: « Bernard, perak ec'h euz kuiteat ar bed? » Ha n'eo ket evit beza sant eo? Labour eta d'en em » zantifia.»

Evel m'en doa eur galoun dinam ha ma kastize he gorf dre ar binijen, Bernard, en he bedennou, ne zanje nemed e Doue, en henvelep doue ma ne ouie ket ar pez a dremene en dro d'ezan. Karet a rea ober al labourou distera ha poanusa euz an ti, met e kreiz he labourou, ne golle morse ar zanj a Zoue. Eur bloavez, pa ne e'helle ket, abalamour d'he nebeut a iec'hed, heuil ar relijiuzed all evit an eost, ec'h en em erbedaz ouz Doue, ha Doue a roaz d'ezan raktal ar c'hras a rekete.

Goude beza tremenet daou vloaz e Sito, sant Bernard hag eun nebeut relijiuzed all a oue karget da zevel eur gouent nevez e Klervo. O veza bet hanvet da zuperior er gouent man, Bernard a gendalc'haz da ren ar memes buez piniennuz. Koueza a reaz, meur a vech, en diez euz a bep tra, met Doue a zeue bepred, dre eur burzud benag, da zikour he zervicher. Kastiza a rea he gorf en eur nac'h outan ar pez a e'helle he grenvât; he nerz a iea digantan a zeiz da zeiz; red a oue d'ezan zoken rei he zilez epad bloaz.

O veza distroet d'he gouent, sant Bernard a c'houarnaz he vene'h gant dousder, kentoc'h evel eun tad eget evel eur mestr; ne c'houe'hemenne d'ezo netra ha ne rafe ket he-unan. He zantelez, he zousder hag he brezegennou helavar a c'houeze kalonou an oll. Eun niver braz a dud iaouank a droaz kein d'ar bed evit mont d'ar gouent, setu ma oue red sevel evito eur maread kouenchou all.

Ar zant a sklerijennaz, dre he gomzou, kalz a heretiked; ar pabed hag ar rouaned a c'houlenne kuzul di-

ganthan, hag her c'harge da lakât ar peoc'h el leac'h ma veze eur guden benag dies da zirouestla.

E kreiz he labourou, sant Bernard a gavaz amzer da skriva levriou hag a ziskuez d'eomp he zevosion dener evit ar Verc'hez Vari, hag ar c'hoant en doa da skigna an devosion-se etouez an dud.

Erfin, goude beza bet evit an oll eur skouer a bep seurt vertuziou, goude beza great fae var ar c'hargon huel a ginniget d'ezan, sant Bernard a varvaz e Klervo, etre divreac'h he relijiuzed, d'an 20 a viz eost euz ar bloaz 1153.

DARN EUZ KENTELIOU SANT BERNARD

I. — Ha n'eo ket eun dra souezuz e teufe an den, eur prenv douar, d'en em zevel, pa z'eo eun Doue en em izeleat?

II. — Pegen talvoudek eo an humilite: tenna a ra varnomp grasou Doue.

III. — Seul-vui e klask an den kemeret he blijadur gant an dud, seul-nebeutoc'h a blijadur en dezo digant Doue.

IV. — Seul-vui e labourer evit Doue, seul-vui a nerz-kaloun a zo el labour.

V. — E peb amzer e tleomp sonjal er maro, p'eo guir e tostaomp outan bep kammed.

VI. — Goude Doue, va oll fizians a zo er Verc'hez Vari, mam Doue.

AN UNAN VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Santez Jeann-Franseza de Chantal

(1572-1641)

Jeann a deuz er bed e Dijon, d'an 23 a viz genver 1572. Ne devoa c'hoaz nemed trivac'h miz pa gollaz he mam: he zad eo a gemeraz neuze soursi d'he c'helen-

Hen ober a reaz gant kement a frouez ma oue gullet Jeann, d'an oad a bemp bloaz, o stanka he c'hinou d'eun heretik a glaske difen outi n'ema ket Jesus-Christ e sakramant an aoter. Nebeut bloaveziou goude, ec'h en em viraz diouz lasou stegnet var he hent gant eur plac'h divezet, evit he lakât da goueza er pec'hed.

D'an oad a ugent vloaz, Jeann a zimezaz d'eun ofiser, an Aotrou de Chantal. Kenta a reaz, pa oue eat da joum gant he fried, a oue lakât urz vad en ti. Betek neuze, na veze ket lavaret an oferen e chapel ar maner; hiviziken oll zervicherien an ti a gleve bemdez an oferen er japel-ze; d'ar zul ha d'ar goueliou e klevent an oferen en iliz parrez, ha bemnoz ar zantez he-unan a lavare d'ezo ar pedennou.

Pa iea he fried euz ar gear, Jeann, e leac'h kemeret skouer diouz merc'hed ar bed a glask ho flijadur hebken, a joune en he falez heb gullet na reseo den, koulz lavaret. He amzer a dremene o pedi. o labourat hag o kemeret soursi euz he yugale. Met pa veze distro he fried, e rea peb tra evit plijout d'ezan; avechou zoken e leze a gostez lod euz he devosionou, evit gellout tremen muioc'h a amzer gant ar gompagnunez a zeue d'he zi. Var ar poent-man, an Aotrou de Chantal a leze ganti peb frankiz; rak-se an unani a rene etrezo; an daou bried en em gare an eil egile.

Met var an douar, an eürusted n'eo ket paduz. Eun devez, an Aotrou de Chantal a oa o chaseal gant eur mignoun en eur c'hoad; heman her c'hemeraz evit eul loen gouez, hag a dennaz varnan. Nao devez goude, an Aotrou de Chantal a varve en eur bardouni d'he vuntret. An Itrou de Chantal, o ren neuze he 28 vloaz, a joumaz intanvez gant tri grouadur; c'houec'h e doa bet, met tri a oa marvet abred.

Eviti da veza glac'haret, Jeann a zougaz ar groaz-se heb en em glem; ober a reaz dioc'htu vœu a jastete, heuil a reaz eur reolen stris a vuez. He nosveziou a dremenaz o pedi Doue; kreski a reaz he aluzennou, hag he dillad kaera a oue roet d'ar beorien. Gant an dra-ze e iune aliez, e kemere soursi euz ar re glanv, e louzaoue ho

gouliou; sikour a rea anezo da gaout eur maro mad. Dindan he dillad all e touge eur c'houriz reun.

M'e devoa karantez evit an dud, Jeann a gare muioc'h c'hoaz an Aotrou Doue; deut e oa zoken da skriva, gant eun houarn ruz, var he c'haloun, hano Jesus, evit diskouez na felle d'ezi beva nemet evitan.

O veza kemeret kuzul digant sant Fransez a Zales, Jeann a lavaraz kenavezo d'he zad, d'he mab iaouanka ha d'he oll zud, hag a skoaz etrezek Annesy. He mab, goude beza, e peb doare, enebet ouz he vam, a astennaz var dreujou an ti; red e oue da Jeann mont dreistan, evit kuitât ar gear. Sevel a reas en Annesy eun Urz leanezed. dindan an hano a Leanezed ar Visitasion. Goude beza guelet he Urz oc'h en em skigna, ar zantez a gouezaz klanv e Moulins, d'an ampoent m'edo o velet he c'houenehou. Mervel a eure d'an 13 a viz kerzu euz ar bloaz 1641.

Ar burzudou c'hoarvezet goude he maro, a reaz d'ar Pab Klemant XIII he lakât var roll ar zent; he gouel a oue merket d'an 21 a viz eost.

SONJOMP ERVAD :

Ar zantez-man a veze soursiuz da lavaret bemnoz ar Battered vraz assemblez gant he zervicherien. Kement-se a rouesa bemdez en tiegeziou, ha goulskoude ma vijet aketuz d'ar c'hiz vad-se, ar pedennou ne vijent ket dilezet ken aliez. Ouspenn c'hoaz, ar pedennou great gant an oll assemblez a denn var eun tiegez bennoz an Aotrou Doue. Jesus-Christ a lavar d'eomp: « El leac'h ma vezo daou pe dri unanet em hano, » me a vezo en ho zouez. » Hogen, el leac'h m'ema Jesus-Christ, e ren ar peoc'h hag an unani; ar priejou a ro skor an eil d'egile, ar re goz a vez doujet, ar re vian a vez savet ha kenteliet; en eur ger urz hag eürusdet a zo er famil.



AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Santez Klara a Montfalcon, Leanez

(1275-1308)

Ganet er bloaz 1275, Klara, galvet gant Doue da ober traou burzuduz, a ieaz d'ar gouent d'he femp bloaz, hag a heullaz, divar neuze, ar reolen koulz hag al leanezet. En em voaza a eure abred da ober pinijen.

Dre ma kreske he oad hag he nerz, e kreskaz he finijennou: beva a rea aliez divar bara ha dour ha kouskat var an douar noaz, he c'horf a gastize dalc'had betek ar goad, iun a rea bemdez. Pedit a rea pell hag hir en noz. Pasion ha maro Jesus-Christ a veze aketuz var he zonz, hag Hor Zalver a reaz d'ezi gouzanv, dre vuzud, eun nebeut euz an tourmanchou en deuz divoasket var ar Groaz.

Gant aon na vije bet kollet gant an ourgouil, ar zantez a gare kalz beza disprijet, na lavare morse an distera vad anezi he-unan. Entent a rea ouz ar re glanv gant ar brasa karantez, hag eun devez m'e doa bet donjer o velet eur gouli louz hag heuzuz var gorf eur vaouez, e stagaz da c'houde he muzellou ouz ar gouli-ze, evit beza treac'h d'ezi he-unan.

N'eo ket souez e defe bet grañou kaer digant Doue; guelet a reaz avechou ar Vere'hez Vari gant he Mab Jesus etre he divrec'h.

Hanvet e oue Superiorez, ha divar neuze, he finijennou a oue rustoc'h c'hoaz. Eun devez ma komze d'he C'hoarezed euz ar zaour a gaver o sonjal e Pasion Hor Zalver, eul leanez a lavaraz: « Evidon-me a ra pell zo » va fedennou en eur zonzal e Pasion Jesus-Christ, ha

» ne gavan plijadur ebet em feden. »

An diaoul a glaskaz kerkent ober d'ar zupierez koll he fasianted: na respountaz ger trenk ebet, guir eo, met ne ziarbennaz ket dioc'htu-dioc'htu an dentasion, hag an dra-ze a zisprijaz da Jesus. Seul-santelloe'h e vez eun den, seul disteroc'h tra a ra da Zoue kastiza anezan: ar zantez a baeaz ar mank-se o c'houzanv unnek vloaz see'hor en he ene.

Hed an amzer hir-ze, Klara n'e devoue nemet nec'ha mant ha trubuill var he spered, ne zante karantez ebet en he c'haloun evit an Aotrou Doue, ne gave ket an distera saour gant he fedennou, ne gleve mui mouez Jesus o komz outi gant dousder: he ene a oa tenvalleat gant tentasionou a luxur, a zizesper, gant c'hoantegeziou da vlasphemi.

Evit pellât ar zec'hor-ze, evit santout a nevez tomder karantez Doue, ar zantez a greskaz he finijennou, a astennaz he fedennou; humbl atao, e oue karantezusoc'h evit he C'hoarezed; en despet da-ze, ar zec'hor a badaz unnek vloaz. Dibarfet e oa bet eur pennadik, epad amzer eul luc'heden marteze; paea a reaz dre hir bonn. Pegen striz eo justis Doue !

Divar an unnek vloaz-se, ene ar zantez a oue beuzet en eur mor a levenez; douget e veze aliez a spered beteg an env, eno e vele traou dudiuz; burzudou a rea heb ehan; choum a rea sizuniou ha miziou penn da benn heb dibri an distera tam boued. Met ive, nag hi a zioualle da ober disprijadur da Jesus !

Mervel a reaz d'he zri bloaz ha tregont, er bloaz 1306.

SONJOMP ERVAD :

Ar zantez-man a oa boaz da zonzjal e Pasion Hor Zalver. Nag a leac'h en deuz peb den da zonzjal er Basion ze, pa 'z eo guir Jesus en deuz hor prenet dre he varo! Nag a frouez a denn eun den euz ar zonzj-se pa 'z eo guir eur zant a lavar d'eomp: « Sonj ar Basion a ra muioc'h a vad d'an ene eget » n'eo iun divar bara ha dour. »

Sonjomp, n'eo ket hebken er poania en deuz divoasket Hor Zalver en he gorf sakr, sonjomp en dristidigez e deuz

beuzet he ene, er glac'har e deuz rannet he galoun p'eo bet guerzet gant Judas, dilezet gant he ebetel, nac'het gant Pér: da c'houde, dioualomp guelloc'h rak ar pec'hed.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Philip Benisi

(1222-1285)

Ar zant-man a oa ganet e Florans. He dad hag he vam, tud a zoujans Doue, o c'houzout ervad e kendalc'h eur bugel da heuil pœurlies a plegou en deuz kemeret en he iaouankiz, a roaz d'ezan abred eur geennadurez vad ha kristen. Kement-se a reaz d'ar c'hrouadur miret he ene disklabez.

Goude beza bet eur pennadik er skol en he vro, Philip a ieaz da Baris da studia ar vedisinerez. Resevet e oue doktor e Padou. O veza distro d'ar gear, Philip a ieaz eun devez d'an oferen da japel ar Zervited. An Urz-man a oa savet pemzek vloaz a oa e Monte Senario, e Floranz. Eno e klevaz lenn, en Abostol, ar c'homzou-man lavaret guechall gant ar Spered-Santel d'an avieler Philip: « Tostait ha kit betek ar c'harr-zont. » Ar zant a gemeraz ar c'homzou-ze evel pa vijent bet lavaret d'ezan he-unan. En noz varlerc'h, e kreiz he hure, e klevaz eur vouez o lavaret d'ezan ar memez komzou, hag e kredaz gullet ar Verc'hez oc'h he bedi da vont en Urz ar Zervited.

Goulen a reaz eta beza resevet evel **Frer** en Urz-se: resevet e oue, ha kaset da Vonte Senario evit labourat an douar. Hen ober a reaz gant aked; met ne ankounac'hea ket ar zonzj a Zoue, ha pa veze dibrez, ec'h en em

denne a gostez evit sonjal e Pasion Hor Zalver, ha gla-
c'har ar Vere'hez var menez Kalvar. Ken humbl e oa,
ma klaske kuzat ouz an oll he zeskadurez, met heb dale
he vouiziegez a oue anavezet. Great e oue d'ezan neuze
reseo an Ursiou sakr; an den santel ne asantaz evelato
nemet dre zentidigez.

Ar Pab Klemant IV o veza maro, ar gardinaled a zon-
jaz henvel Philip evit dere'hel he blaz var gador sant
Per. Ar zant, pa glevas ar c'helou-ze, a 'z gaz da guzat
dre humilite, ken a oue hanvet eur Pab nevez. Epad an
amzer-ze, ec'h en em roaz d'ar beden ha d'ar binijen.
En em blijout a rea o iun; ne zebre nemet iead divlaz
ha ne eve nemed dour.

Doe a ziskleriaz d'ezan e tlie skigna he lezen er bro-
iou estren. Kuitât a roaz eta ar menezioù evit dont e
Frans, en Allemagn hag en Itali. Var hent Viterb, eun
den lor a c'houlenmaz digantan an aluzen. Evel n'en de-
voa nag aour, nak arc'hant, Philip a ziviskaz he vantel
evit he rei d'ar paour kez, met a veac'h m'en doa an den
lor guisket ar vantel, m'en em gavaz pare.

Philip n'en devoa ket he bar evit lakât ar peoc'h da
ren etouez an dud. Goude beza great d'ar garantez ren
a nevez etre Florans ha Pistoa, ar zant a glaskaz unani-
tud Forli. Ar re-man, kounnaret oll, a voallgasaz Phi-
lipp, hag a daolaz anezhan er meaz euz ho c'hear. Se-
vel a reas evelato keuz gantho, hag e rejont ar peoc'h.
Unan anezho zoken a stouaz, dirak ar zant, en eur c'hou-
len pardoun digantan.

Sant Philip a iez eur vech c'hoaz da velet he gouen-
chou. Digouezet e Todi, e stouaz dirak aoter ar Vere'hez
en eur lavaret: « Ama e tlean mervel. » Deiz gouel Ma-
ria-Hanter-Eost e kouezaz klanv: o santout ar maro o
tostât, e reaz digas d'ezan he leor, da lavaret eo ar gru-
sifi. Goude beza he studiet epad he vuez, e felle d'ezan
mervel en eur starda anezi var he galoun. Mervel a eure
d'an 22 a viz eost euz ar bloaz 1285, da c'houel eizvted
Maria Hanter-Eost.

SON MP ERVAD :

Sant Philip a hanve ar grusifi he leor. Kement-se a zo guir;
rak en eur studia al leor-ze, en devoa desket skiant ar zent.

N'eo ket sant Philip Benizi hepken, met c'hoaz kalz a zent
all o deuz anzavet beza desket muioc'h eharz treid ar grusifi
eget en oll leoriou. Al leor-man a zo digor d'an oll; pep
hini a c'hell lenn ennan, an dud desketa koulz hag ar re
all. Kemerit eta aliez ho krusifi: pe c'houi a vezo er boan,
pe c'houi a vezo tentet, pe c'houi a vezo enkrezet, goulennit
gant fizians sikour digant Jesus; hen a roio d'eoc'h nerz, skle-
rijen ha laouenedigez.



AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Bartheleme, Abostol



Bartheleme, ginidik euz ar Galilee, a oa pestekear dre vicher. Jesus o veza her galvet d'he heul, Bartheleme a

guiteaz peb tra, ha ne zonzaz mui goudeze klask ar pez en devoa kuiteat. Ar blijadur a reaz d'ezan kelennadurez Hor Zalver a entanaz kement he galoun, m'hen heulie e peb leac'h. Gantan edo pa jenchaz an dour e guin en eured Cana, pa bareaz mevel ofiser Capharnaüm, pa roe ar pare d'eur maread re glanv, tud dall, tud seizet ho izili, pa rente ar vuez d'ar re varo. En eur ger, nebeut a vuzudou a reaz Jesus-Christ, ha ne oue ket Bartheleme test anezo.

Abarz en em zispartia evit mont da brezeg an Aviel, an Ebstel en em glevaz var ar broiou a dlie pep hini anezo gounit da feiz Jesus-Christ. Bartheleme en devoe evit he lod al Likaoni, an Albani, an Indez hag an Armeni. Kas a reaz gantan an Aviel skrivet gant an abostol sant Vaze, ha dre gement leac'h ma tremene, ne espernaz ket he boan evit kelen ar bobl; souezuz eo en defe gounezet da Zoue kement a baianed. He vuez santel hag ar burzudou a rea a oue anavezet buan: ne veze mui hanvet nemet abostol ar guir Doue, hag an den a viraklou.

D'an ampoent, Polymius, roue an Armeni, en devoa eur vere'h hag a oa eat an diaoul en he c'horf. Ar roue, o veza klevet komz euz ar zant, her galvaz d'he balez, hag an abostol a reaz d'an diaoul tec'h raktal. Ar roue, dre anaoudegez vad, a ginnigaz d'ezan traou kaer; met Bartheleme a respountaz: « Na glaskan nag aour nag » arc'hant, met silvidigez hoc'h ene, hag hini ho pobl. » Dont a ran, emezan, evit ober d'eoc'h anaout ar guir » Doue, an hini en deuz krouet an env hag an douar, » hen hebken a c'hell beza adoret. » Ar zant a gelemmaz neuze ar roue ha tud he balez var guirioneziou ar relijion, hag a roaz d'ezo ar vadiziant. Beleien an idolou, o velet an oll o trei kein d'ho doueou, a ieaz da gaout Astiajez. Ar prinz-man a reaz gervel an abostol dirazan, hag hen tamallaz da veza touellet he vreur, Polymius, en eur ober d'ezan ha d'eum niver braz a dud euz ar rouantelez, dilezel an idolou. Rei a reaz urz raktal da ziskroc'henna Bartheleme ez-veo. Daoust ma oa spountus he verzerenti, ar zant a c'houzanvaz he boan heb

klem; hag o veza ma choume beo, ha ma kendale'he da brezeg Jesus-Christ, ar prinz dinatur a reaz he zibenna.

He gorf santel a oue enterret en Armeni, hag eur maread miraklou a c'hoarvezaz var he vez. Met goude eun nebeut bloaveziou, ar gristenien a oue a nevez, goall gaset; ar baianed a gemeraz relegou ar zant, hag ho stlapaz er mor. Kavet e ouent en enezen Lipari, tost d'ar Sisil. Met an dud divadez a gemeraz an enezen-man, hag ar relegou a oue neuze digaset da Venevant, hag ac'hano, da Roum; eno ho mirer c'hoaz gant kalz a respet.

SONJOMP ERVAD :

Sant Bartheleme, an oll ebestel hag eun niver braz a zent o deuz skuillet ho goad evit Jesus-Christ; n'euz ket eur zant ha n'en defe ket bet eun dra benag da c'houzanv er bed-man. Mab Doue he-unan en deuz douget he groaz; pep hini ac'hanomp a die ive dougen he hini, rak dre ar groaz heben e c'hellomp beza salvet. Met red eo dougen ho kroaz evel m'en deuz great Jesus-Christ hag ar zent, da lavaret eo, heb en em glem. Ar zent oll o deuz lakeat ho foaniou da dalvezout evit ar bed all, en eur c'houzanv gant pasianted, o soubla bepred da volonteze Doue. Jesus-Christ o vervel var ar groaz, e leac'h skei he vourrevien var an taol, a zeu da bardouni d'ezo. Setu aze penaoz o deuz gouzanvet Hor Zalver hag ar zent; setu aze ive, eneo kristen, penaoz e tleit gouzanv ar poaniou a zigouez ganeoc'h er bed-man.



AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Lois, Roue Frans (1214-1270)



Ar zant-man a deuaz er bed er boaz 1214. Koll a reaz he dad d'an oad a unnek vloaz. Ar Rouanez Vem, he vam, en em gargaz he-unan euz he zeskadurez; poania a reaz dreist peb tra da ober d'ezan karet Doue ha kaout heuz ouz ar pec'hed. Lavaret a rea d'ezan aliez: « Va mab, daoust m'ho karan a greiz va c'haloum, e ve » guell ganen o kueleit maro eharz va zreid, eget guelet » ac'hanoc'h o saotri hoc'h ene dre eur pec'hed mar-

» vel. » Ar c'homzou-ze a iez ken doun e kaloun ar bugel, ma leverer ne gouezaz biskoaz er pec'hed marvel.

He vadelez hag he garantez dispar a c'hounezaz d'ezan kalonou he zujidi. Ar vrud euz he furnez a rea d'an oll dont d'he gaout pa veze eur guden benag da zilua, ha Lois a gemere plijadur o selaou hag o renta justis d'an dud distera memez, azezet dindan eur vezen dero euz koat Vinsemm.

Leun a zisprijanz evit traou ar bed, Lois a viske eur porpant reun dindan he zillad a roue, hag a veve er binijen. Mont a rea he-unan d'an hospitaliou da velet ar re glanv ha d'ho louzaoui. Iun a rea bep guener, ha bendez e kleve diou oferen. Bep bloaz, da zeiz Guener ar Groaz, Lois a iea d'ar Chapel Zantel e Paris, el leac'h ma virer eun tam euz a Groaz Hor Zalver. Eno, gant he zillad a roue, hag eur gurunen var he benn, e lakea ar Groaz a vel d'an oll; ha goude beza great eur beden, ez ea diskabell ha diare'hen da boket d'ar Groas Sakr.

Met, mar doa aketuz da veva e guir gristen, Lois ne ankounac'hea ket he zeveuriou a roue: diskar a reaz an dudhentil vraz a glaske nac'h he c'halloud, ha tree'hi a reaz ive ar Zaizon var dachen an emgann. Evelse e teuaz da veza doujet, hag epad m'edo ar broiou all oc'h en em zispenn, ar peoc'h a rene e bro Frans. Lois a zougaz lezennou evit kastiza al leou douet hag ar blasphemou, ober a reaz toulla ho zeod d'an douerien vraz, gant eun houarn ruz.

O veza kouezet goall glanv, ha zoken dare da verveit, Lois a reaz le, ma rofe Doue ar pare d'ezan, da vont d'an Douar zantel, a oa d'an ampoent etre daouarn an Turked. Pareet e oue, ha kerkenet ez eaz en hent gant an arme en doa savet. O veza digouezet en Ejipt, e tree'c'haz dioc'htu ar Sarrazined, hag e kemeraz kear Damiett. Met ar c'hlenved a gouezaz var ar zoudarded, hag a zistrujaz kement anezo, ma oue tree'het arme ar gristenien. Lois, taolet er prizoun, a veve e peoc'h evel pa vije bet en he balez, en despet d'ar poaniou en devoue da c'houzav a berz he enebourien. Erfin, ar roue

santel hag he dud a oue dichadennet, var bouez paea eur ranson vraz.

Lois a joumaz pemp bloaz c'hoaz en Douar Zantel, met ar rouanez Venn, he vam, hag a c'houarne ar Frans d'an ampoent, a varvaz neuze. Ar zant a zistroaz dioc'htu er Frans, ha goude beza lakeat ar peoc'h etre ar rouanteleziou, savet eun niver braz a ilizou, a gouentchou hag a hospitaliou, e lakeaz en he benn distrei adarre d'an Douar Zantel; rak ar c'heleier a reseve euz stad truezuz ar gristenien a oa eno, a ranne e galoun. O velet he nebeut a iec'hed, ar pennou braz a glaskaz hen dizalia, met en aner.

D'an deiz kenta a viz gouere euz ar bloaz 1270, Lois a reaz hent, evit kemeret Tunis da genta, ha da c'houde, an Douar Zantel. Pa erruaz al listri e Tunis, an Turked a oa o tiouall an aod a gemeraz an teac'h, met ar vosen a dagaz arme ar Fransizien, hag ar roue he-unan a gouezaz klanv. O velet n'en doa mui pell da veva, e c'halvaz he vab Philipp, hag e roaz d'ezan he gelemnadurez diveza. Goudeze, e resevaz he zakramanchou, hag e varvaz e peoc'h, d'ar 25 a viz eost 1270, d'an oad a bemp bloaz hag hanter-kant. He relegou a oue digaset e Frans gant he vab Philipp, hag enterret e Sant-Denis, tost da Baris. Lakeat eo bet e renk ar zent, d'an 11 a viz eost euz ar bloaz 1297.

SONJOMP ERVAD :

Ar rouanez Venn a lavare aliez d'he mab: « Va mab, ho » karet a ran a greiz va c'haloun; goulskoude e ve guell » ganen ho kuelet maro eharz va zreid, eget ho kuelet o saou » tri hoc'h ene dre eur pec'hed marvel. » Ar c'homzou-ze a iez ken doun en he galoun, ma na reaz biskoaz pec'hed marvel ebet. Ha sonjet oc'h euz avechou, tadou ha mammou, rei eun hevelep kelemnadurez d'ho pugale?



AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Zephyrin, Pab ha Merzer

Ar zant-man a oa ginidik euz a Roum. Brudet e oa dre he zantelez hag he zeskadurez etouez ar gristenien, ha pa oue merzeriet ar Pab Sant Viktor, Zephyrin a oue hanvet en he leac'h.

D'ar mare-ze an impalaer Sever en devoa douget eul lezen evit goall-gas ar gristenien. Ar pab santel ne espernaz nag he boan nag he amzer evit sikour he dud en ho zristidigez hag en ho anken. Noz-deiz e rede d'ho ziez: disken a rea er plasou dindan ar douar, hanvet Catacomb, el leac'h m'en em denne ar re o devoa ar muia spount rak an tourmanchou, ho c'hrenvât a rea dre ar gommunion zantel; riskla a rea he vuez zoken en eur vont betek ar prizoniou, da rei nerz d'an dud dale'het enno. Ar brezel-ze a badaz nao bloaz, hag ar pab santel en devoe erfin an eurvad da velet ar peoc'h o ren adarre dre ar vro.

Pa oue roet ar peoc'h d'an Iliz, eun heretik, Montan, a hadaz muioc'h mui he falz kredennou etouez an dud, diskleria a rea ez euz pec'hejou grevus ha na c'hellont ket beza pardounet: re vraz int. Zephyrin a glaskaz difazia Montan, met heman a reaz he benn fall; ar Pab neuze, evit miret na golfe ar gristenien, a daolaz an ex-kumunugen varnan.

Sevel a reaz dizale heretiked all, hag a vlaspheme en eur lavaret: « Jesus-Christ n'eo ket Doue. » An heretiked-se a douellaz eur c'hristen mad, Natalis, hag en doa gouzanvet poan evit Jesus-Christ, d'ar mare ma voall gaset ar gristenien; Natalis a oue great eskop ganto. Doue, gant truez ouz ar falz eskop, her sklerijenaz dre he gousk, met heman a reaz skouarn vouzar. Elez a deuaz eun nosvez, hag a roaz d'ezan eur guiskad ba-

zadou evit he vrasa mad, neuze e teuaz da zonjal a zevri en he vuez. Tost e oa bet d'ezan kaout kurunen ar verzerien, ha breman, e oa en em zavet eneb Hor Zalver. Pebez dallentez!

Eur mintinvez eta, Natalis a ieaz da zaoulina dirak ar Pab: eur viskamant a binijen a oa ganthan, hag an daelou a rede puill euz he zaoulagad. Goulen a reaz pardoun, dirak an oll, gant eur guir humilite, hag ar Pab Santel tenerreat he galoun, a resevaz anezhan a nevez e renk ar guir gristenien. An den-ze a gendalc'haz da rapari, hervez he c'halloud, ar skoueriou fall en doa roet pa oa eat da falz eskop.

Epad ma reñe ar peoc'h, Zephyrin a zifennaz implija kaluriou koat evit an oferen hag a c'houre'hemennaz d'an oll kommunia da Bask. Embann a reaz c'hoaz lezennou all evit an eskibien, ar veleien ha an oll gristenien.

Ar peoc'h na badaz ket pell, ar gristenien a oue goall-gaset a nevez, ha Zephyrin a oue paket gant ar re genta, ha barnet d'ar maro. Dibennet e oue, d'ar 26 a viz eost euz ar bloaz 217.

SONJOMP ERVAD :

En amzer ma oa ar gristenien goall-gaset, sant Zephyrin a veze aketuz d'ho c'hrenvât dre ar gommunion zantel. Pebez grasou, pebez nerz, pebez konsolasion a ro d'an ene sakramant an aoter! Krenvât a ra ar feiz p'eo guir eo ar mister dreist peb mister. An dousder a zantot en ho kaloun en eur zakramanti, mar demaoc'h e stad vad, a raio d'eooc'h anaout sklear n'e zeuz nemet Doue hag a c'helfe lakât en hoc'h ene kement a levenez. Ho fizians e Doue a gresko, ho karantez evitan hag evit ho nesa a ielo var grenvât. Ouspenn-ze, ar gommunion a lakaio ar c'hig da zuja d'ar spered, a vougo en ho kaloun tan an ioulou fall. It eta da reseo Jesus-Christ, it d'he reseo aliez.



AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Joseph Kalasans

(1556-1648)

Joseph a oa ganet e Petralta, en Aragon, er bloaz 1556. He dud, vertuzuz meurbet, a roaz d'ezan eun deskadurez kristen, ha Joseph ne ankounac'heaz nak ar c'hentelioù a resevaz diganto, nak ar skouerioù mad a roent d'ezan. Diskouez a reaz a vianik pegement e karc ar beden, ha peger madelezuz e oa evit he nesa. D'an oad-se, ec'h en em blije dija o c'helver davetan ar vugale all evit ho c'helen var ar relijion, ha deski d'ezo ho fedennou.

Goude beza bet resevet doktor var skianchoù ar bed ha var ar skianchoù sakr, Joseph en em roaz da studia c'hoaz an theoloji. Eur vaouez a renk huel a glaskaz neuze he zougen d'ar peoc'hed, met an den iaouank he c'hasaz divar he dro.

Goulskoude he gerent a felle d'ezo he zimezi, met Joseph en doa c'hoant en em rei oll da Zoue. Reseo a reaz an Ursiou sakr; hag, eur vech beleget, e prezegaz an Aviel er C'hastill, en Aragon hag er C'hatalogn, en eur zisc'hrizienna an techou fall euz a douez ar bobl, hag en eur lakât ar peoc'h hag an unani etre an dud.

Met Doue a c'halve Joseph da Roum. Senti a reaz euz mouez ar Spered-Santel, hag eur vech digouezet er gear-ze, ec'h en em roaz d'ar ium ha d'ar binijen. Trem en a re a deiz hag an noz o pedi. He garantez evit ar beorien, ha dreist oll evit ar re glany a oa heb muzul; mont a re betek ar prizounioù da gas d'ezo he aluzennoù. Ar vosen o veza deut er vro, Joseph koulz ha sant Kamill a Lelliz, a redaz dre an hospitalioù ha dre kear a bez, evit klask ar re baour hag-entent outo. Dougen a

rea ar re varo var he ziouskoaz evit ho c'has betek al leac'h ma tliant beza sebeliet.

Eur vouez euz an env a ziskleriaz d'ezan e tlie en em garga euz kelennadurez ar vugale, ha dreist oll euz ar vugale baour. Neuze e savaz eun Urz nevez, he lakat a reaz dindan patrounach Mam Doue: hanvet e oue Urz Kloaregêd ar skolioù devot. An Urz-man, aotret gant ar pab Klemant VIII, Paol V, hag eur maread pabed all, en em skignaz e berr amzer en oll broioù euz an Europ. Kement a boan en devoue ar zant o kas al labour-ze da benn, ma choume an oll mantret o velet he nerz kaloun. En despet d'an oll dregas en doa gant he Urz da ren, Joseph ne ankounac'heaz ket kelennadurez ar vugale; ho c'hentelia a re he-unan eur pennad benag bemdez skuba a re an ti var ho lerc'h, ho heuil a re betek ar gear.

Daou vloaz hag hanter-kant e choumaz er stad-se, en eur rei d'an oll eur skouer kaer a basianted hag a humilite. Doue a zigollaz he zervicher dre veur a vuzud, dirak he ziskibien zoken, rak ar Verc'hez, gant ar Mabik Jesus, en em ziskouezaz d'ezo epad ma oant o pedi. Abaoue he vugaleach, Joseph en doa bet atao eun devosion vraz evit ar Verc'hez; alia a reaz ive he ziskibien da gemeret skouer dioutan.

Mervel a eure e Roum, d'ar 25 a viz eost 1648, d'an oad a 92 bloaz; kant vloaz goude, he gorf hag he deod a oue kavet en ho fez. Ar burzudou c'hoarvezet var he vez a reaz d'ar pab Beneat XIV he lakât e renk an Duñ Eüruz; divezatoc'h, ar pab Klemant XII hen lakeaz e renk ar zent.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a gare, a vianik memez, boda en dro d'ezan ar vugale all, evit deski d'ezo ho relijion hag ho fedennou. Mar deus en ho touez, lennerien, unan benag hag a c'hell heuil ar skouer kaer a ro d'eomp ar zant-man, her pedan d'hen ober. Pebez vad a rafac'h en doare-ze, dreist oll d'ar vugale baour; ar re-man a vez peurlissa dilezet gant ho c'herent, n'o deuz den evit ho c'helen; avechou all e vezont etre daouarn tud difeiz, hag ar re-man, var an distera di-

garez, n'ho lezont ket da vont da zelaou ar prezegennou a vez great en iliz. Na pegen braz e vezo ho mirit, mac'h en em roit d'an oberou-ze a drugarez!

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Aogustin, Eskop ha Doktor

(354-430)

Sant Aogustin a oa ganet en Afrik, er bloaz 354. Evel m'en devoa eur spered kaer, e teuaz da veza, e berr amzer, gouizieq var oll skianchou ar bed.

Goude maro he dad, Aogustin a iez d'ar skol da Garthaj. Dija, en despet da oll e'hourdrouzou he vam, e oa en em roet eun nebeut d'an dizursiou; met er gear-man, e velaz kement a skoueriou fall, m'en em beur-gollaz. Ne glaske e peb tra nemed rei kabestr d'he ioulou fall, ha daoust m'en doa lakeat he hano evit beza badezet en Iliz katolik, ez ea da heul an heretiked. Choum a reaz er stad-se epad tri bloaz. He vam, o velet he vuez direol, na ehane da ouela noz deiz, ha da bedi Doue da zellet a druez outan. Mont a reaz beteg eun eskop santel, hag hen, o velet he glac'har, a lavaraz d'ezhi: « Va mere'h, » kendalc'hit da bedi evitan; eur mab, hag a zo skuillet » varnan kement a zaelou, ne e'hell ket mont da goll. »

Goude beza bet eur pennad o rejanti e Carthaj, Aogustin a deuaz da Roum; eno e kendalc'haz da zarempredi an heretiked. Ac'hano e skoaz etrezek Milan, hag, o veza klevet pegen helavar e oa sant Ambroaz, eskop ar gear-ze, Aogustin a iea aliez da zelaou he brezegennou. Eun tamik sklerijen a deuaz en he ene; guelet a reaz n'edo ket ar virionez gantan. Eun devez, etr mignoun a gomzaz d'ezan euz ar vuez santel ha pinijennuz a rene, pell diouz trouz ar bed, eun niver braz a venec'h a bep stad.

Neuze Aogustin a lavaraz: « Petra eo kement-man? E » petra e sonjan-me? Ar re-ze a deu da e'houmit an env » ha me ne ran nemet en em staga ouz an douar? » Hag o veza eat en he jardin, ec'h en em lakeaz da hirvoudi ha da skuill daelou e'houero, en eur lavaret: « Betek peur » eta, o va Doue, e chomin e lasou an drouk-spered? » Peur e torrin ar jaden am stag ouz an douar? Var- » e'hoaz, vare'hoaz! Ha perak ne lakfen ket hirio eun » termen d'am dizursiou? » Raktal e klevaz eur vouez, henvel ouz mouez eur bugel, o lavaret: « Kemerit ha » lennit, kemerit ha lennit! » O veza digoret leor Lizeri an Abostol sant Paol, e lennaz ar e'homzou-man: « Na » dremenit ket ho puez er festou, er mesventiou, en di- » zursiou, met en em viskit euz Hor Zalver Jesus-Christ, » ha na dit ket da gountanti ioulou fall ar e'hig. » Aogustin a jenchaz buez var an heur, ha kaloun he vam a dridaz gant ar joa, o klevet ar e'helou-ze.

Evit beza e stad da reseo ar vadiziant, Aogustin en em dennaz en eul leac'h distro da bedi Doue ha da studia ar Skritur Zakr; prest goude e oue badezet gant sant Ambroaz. Bez' e oa neuze 33 bloaz. Hiviziken e klaskaz e peb tra ren eur vuez santel.

Goude maro he vam, Aogustin a rannaz he oll vadou etre ar beorien hag a lakeaz sevel eur gouent el leac'h m'en em dennaz. Met ar brud anezan o veza eat heb dale dre bevar e'horn ar vro, an oll a zirede da e'houlou kuzul digantan. Valer, eskop Hippon, oc'h anaout he zantelez hag he zeskadurez, a reaz d'ezan reseo an Uzziou Sakr, hag he zikour da e'houarn he eskopti.

Divezatoc'h, ar zant a oue he-unan eskop Hippon, met na jenchaz netra en he zoare da veva. Humbl e veze bepred, ha biskoaz ne ankounac'heaz dizursiou he iaouankiz. He galoun a veze evel beuzet e Doue, hag aliez e veze klevet o lavaret: « Gened bepred koz ha bepred » nevez, re zivezad am euz ho karet. » Ar gasoni en devoa ouz ar guall deodou a reaz d'ezan skriva var eun daolien, a vel d'ar re a veze ouz taol ganthan: « Er meaz an nep piou benag a fell d'ezan drouk-prezeg he nesa ! » An eskop guizieq-man na baouezaz da sklerijenna an

heretiked a veve en he amzer, dre he skridou hag he gomzou; mervel a reaz er bloaz 430, d'he 76 vloaz.

DARN EUZ KENTELIOU SANT AOGUSTIN

I. — Pebez follentez na zeufe ket an den, ken dinerz, goulskoude, d'en em zifisiout anezan he-unan.

II. — Evel eul lagad na c'hell guelec'netra nemed dre ar sklerijen, evelse ive an den na c'hell ober netra nemed gant sikour gras Doue.

III. — An nep a fell d'ezan miret ha kreski en he ene karantez an Aotrou Doue, a dle poania da vouga en he galoun karantez ar bed.

IV. — Seul-vui e karan Doue, seul-vui e karfen he garet, kement her c'havan din da veza karet.

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ EOST

Sant Ian Dibenn=Eost

Sant Ian a oa bet choazet gant Doue evit digas kelour euz a zonedigez Hor Zalver, ha lakât, dre ar binijen, an dud e stad vad da reseo kelemadurez ho Doue. Evit kement-se, ar zant en em dennaz a vianik en eul leac'h distro: eno, beteg he dregont vloaz, ee'h en em roaz d'ar binijen ha d'ar beden.

Dougen a rea eur zae great gant reun kanval, gant eur c'houriz kalet en dro d'he groazel; ne zrebe nemed kil-leien raden ha mel gouez.

D'he dregont vloaz, Doue a ziskleriaz da zant Ian ar garg a fizie ennan. Skei a reaz raktal etrezek ar Jourden, en eur alia an dud da vouela d'ho fec'hejou, hag en eur lavaret d'ezo e tlie dizale ar Mesias dont en ho zouez. Ar bobl hen anavezaz evel kannad Doue. He vouez a oa evel eun droumpill euz an env hag a gemenne d'an oll ober pinijen araok barnedigez Doue, hag

en em lakât e stad da reseo ar pardoun a ginniget d'ezo. Kalz tud desket ha c'houezet gant ho deskadurez a deuz ive d'her selaou, met Ian ho zamalle gant rusder abalamour d'ho ourgouill: « Tud savet divar aered-vi-ber, emezan, piou en euz desket d'eoc'h tec'het araok » justis Doue? Grit eta pinijen. » Dont a reaz ive Publikaned ha tud a vuez diroll; Ian ho alie oll d'en em rei d'an oberou a drugarez, ha da drec'hi ho zechou fall; er memez amzer e vadeze ar re o doa guir volontez da ober pinijen.

O klevet prezegemou sant Ian, hag o velet he zantelez, ar Iuvezien a one leun a respet evitan; lod a gredaz zoken e oa hen ar Mesias. Met Ian a respountaz: « Me a vadez dre an dour, met dizale e tevio eun all en » ho touez hag ho padezo dre ar Spered-Santel ha dre » an tan. Me n'oun ket din da zilasa d'ezan he voutou. »

C'houee'h miz a oa m'edo Ian o prezeg hag o vadezi pa deuz Hor Zalver d'he gaout, evit beza badezet gantan. Met Ian, o veza he anavezet, na felle ket d'ezan he vadezi, hag a lavare: « Me eo am beuz ezom da veza badezet ganeoc'h, hag e teuit d'am c'haout ! » Met var respount Jesus, Ian a zentaz. Kerkent an env a zigoraz hag eur vouez a lavaraz: « Heman eo va mab muia karet: ennan ema va oll joa. »

D'ar mare-ze, Herodes a veve gant Herodiades, greg he vreur Philip, ha Ian a rebechaz stard d'an eil ha d'e-gile ar skouer fall a roent. Ne vare'hataz ket evit lavaret d'ar roue ne c'helle ket mont gant greg he vreur. Herodes, daoust m'en devoa doujanz ha respet evit Ian, a iez drouk ennan, hag a reaz taoler ar Zant er prizoun. Evelato, eno zoken e oue doujet c'hoaz, hag Herodes a reaz meur a dra var he ali, rak guelec'netra e oa ar zant eun den a skiant vras. Met Herodiades a vage kasouni ar maro outhan.

Bloaz a oa m'edo ar zant er prizoun, pa roaz Herodes eur goan euz an dibab d'ar pennou braz euz ar Galilee; en envor euz an deiz ma oa ganet. Epad ar pred, Salome, mere'h Herodiades, a zansaz, hag a blijaz kement d'ar roue ma touaz var he le rei d'ezi ar pez a c'houlenfe, ha

pa vije zoken an hanter euz he rouantelez. Salome a icaz neuze da gaout he mam evit guelet petra dlie da c'houlenn. Herodiades, poulzet gant an ourgouill ha tan ar goall ioulou, a zonzaz raktal e maro an hini a rebeche d'ezi he buez direol, hag a lavaraz: « Goulen ma ve roet » d'id penn Ian-Vadezour. » Eun hevelep goulen a reaz poan d'ar roue: asanti a reaz goulskoude, abalamour d'al le en doa great. Eur zoudard a oue kaset d'ar pri-zoum da zibenna ar zant, ha Salome a zigasaz raktal ar penn santel d'he mam. Hervez sant Jerom, Herodiades en em lakeaz da doulla teod ar zant gant eur minaoued. Evelse e varvaz sant Ian, bloaz araok Salver ar bed.

SONJOMP ERVAD :

I. — Peger fall eo an dansou! N'int mad nemed da vaga ioulou fall e kaloun an dud iaouank, da voug an devosion, ha d'ho distrei diouz ar plijaduriou honest. An tadou hag ar mammou a zo kaoz peurvuia d'ho bugale da veza goalleüruz, pa lezont anezo da redek ama hag ahont. Lezel a reont ho bugale da vont d'an dansou, d'an nosvezioù, d'ar foariou: lavaret a reont: ma ne ia ket va bugale d'al leac'hiou-ze, ne vezint ket anavezet, ha ne gavint ket da zimezi. Sonjal fall a reont. Ar re a glask plac'hed iaouank fur, n'ez eont ket d'ho c'hlask en dansou; ne gaver eno, peurliesia, nemet lamponidi ha pennou skanv.

Diouallit, tadou ha mammou, penn sant Iann en deuz paet eun dro zans.

II. — Herodes a reas fall o toui e roje he goulen da verc'h Herodiadez; met falloc'h a reas c'hoaz, o viret he c'her.



AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ EOST

Santez Roza a Lima, Guerc'hez

(1586-1617)

Ar zantez-man, ginidik euz a gear Lima, en Amerik, a zeuaz er bed er bloaz 1586. He hano badiziant a oa Izabel. Tri miz goude m'oa ganet, epad m'edo Izabel kousket, he mam, o veza guelet azioe'h he fenn furm eur rozen, a hanvaz anezi Roza, hag a zale'haz da c'houde an hano-ze varni. Deut var an oad, ar vere'hik santel a gemeraz aoun na ve bet hanvet evelse abalamour d'he gened. Met ar Vere'hez Vari a zavaz peb douetanz divar he spered en eur ziskleria d'ezi pegement e plije an hano-ze d'he Mab. « Ouspenn-ze, emezi, me fell d'in e ve » staget va hano outan, ha ne vez mui galvet nemed Roza za Santez-Mari. »

D'an oad a bemp bloaz, Roza a voestlaz he guerc'hded da Zoue; trouc'ha a reaz zoken he bleo, evel testeni euz ar fae a rea var draou ar bed, hag euz he c'harantez evit Doue. D'an oad a c'houec'h vloaz, e iume teir guech er zizun divar bara ha dour, ha d'he femzek vloaz e reaz vœu da jom heb debri kig, nemet goure'hemennet e ve bet d'ezi hen ober.

Roza a oue bepred sentuz e kenver he zud. He mam o veza lavaret d'ezi eun deiz staga eur gurunen bleun var he fenn, Roza her greaz var an heur, met ar boked a oue staget gant eur spillen sanket er c'hroc'hen betek ar beo. He zud o veza kouezet klanv, ar vere'hik santel a dremene darn euz an noz o labourat evit rei skoazell d'ezo, ha pa vezent fall, Roza n'ho c'huitea na noz na deiz.

O velet e falveze d'he zud he dimezi, Roza a c'houlennaz beza resevet e Trede-Urz Sant Dominik. Resevet e

oue, ha d'an oad a ugent vloaz, e viskaz sae an Urz, met divar neuze e labouraz muioc'h-mui d'en em zantellât. He brasa plijadur a oa soursial ouz an traou disterra en ti; easoc'h e oa d'ezhi choum humbl. Er memez amzer e kreske he finijennou; epad ar c'houraiz ne zebre ket zoken a vara, ha var fin he buez e tremenaz meur a zev-vez heb debri nag eva. Evelato, daoust m'oa he c'horf skuizet gant ar iuniou, ar zantez en em skourjeze betek ar goad gant diou jaden houarn; en dro d'he c'horf e touge atao eur gouriz reum hir ha kalet, sanket emman, ama hag ahont, begou nadoziou lem. Var he fenn dindan he goel, e touge eur gurunen karget a vroudou; he guele a oa great gant tammou koat rust ha begou teol.

En eur c'horn euz ar jardin, Roza e devoa savet eul lochemik evit gellout pedi Doue, pell diouz an trouz. Var fin he buez, e tremene daouzek heur, etre an noz hag an deiz, o pedi. Eun deiz Hor Zalver en em ziskouezas d'ezhi en eur lavaret: « Roza va c'haloun, ho keme- » ret a ran da bried. » Azalek an deiz-se, he spered a oue bepred beuzet e Doue. Met, epad pemzek vloaz, an diaoul a glaskas sklabeza he spered epad eun heur hanter bemdez, en eun henvlepe doare ma n'helle ket lakât he spered da zonzal e Doue, ha ma santaz ar zec'hor o c'hounit he c'haloun; avechou zoken e venne koueza en dizesper. Goude ar stourmad, e vele guech Hor Zalver benniget, guech ar Vere'hez Vari, santez Katell a Ziem pe eur zant all benag.

Roza e devoue ive da c'houzanv a bep seurt klenvejou, met e kreiz he foaniou e lavare ne c'houzanve ket c'hoaz an oll boanion e devoa meritet. « O va Jesus, emezi » kreskit va foan, met er memez amzer, kreskit ennon » ho karantez. » Doue a reaz d'ezhi anaout an deiz hag an heur euz he maro.

O veza kouezet klanv, e resevaz he zakramanehou diveza, hag e varvaz d'ar 26 a viz eost 1617, en eur zerc'hel ar grusifi etre he daouarn. He c'homzou diveza a oue ar re-man: « Jesus ra vezo ganen! »

He c'horf a oue enterret e kouent menec'h sant Dominik. Ar burzudou a c'hoarvezaz epad m'edo c'hoaz

he c'horf var ar varv-skaon, a lakeaz kement a dud da ziredet, ma oue red gortoz daou zev-vez leun, abarz disken ar c'horf er bez.

SONJOMP ERVAD :

Ar zantez-man a dremene daouzek heur bemdez o pedi: hed an nemorant euz an deiz, he spered a veze evel beuzet e Doue. Daoust ha n'eo ket an dra-ze heuil ger evit ger ar pezh a lavar Jesus-Christ: « Red eo pedi, ha pedi bepred. » Sonjit en nebeut amzer a roit bemdez d'ar beden! Ha ne roit-hu ket, bemdez, muioc'h a amzer da draou vean, eget na roit da Zoue? Pegen nebeut e karer an Aotrou Doue, p'en em skuizer ker buan o pedi anezan!

AN UNAN HA TREGONT A VIZ EOST

Sant Remon Nonnat

(1204-1240)

Ar zant-man, ganet er C'hatalogn er bloaz 1204, a deuz er bed goude maro he vam. Pa oue savet da baotr krenn, o velet n'en devoa mam ebet var an douar, e choazaz an Itroun Varia evit he vam, hag e c'houlemmaz he skoazel. Lakeat e oue var ar studi; met he dad, gant aoun na deufe Remon da guitât ar bed evit en em rei da Zoue, n'hen lezaz ket pell er skol hag her c'hasaz var ar meaz. Remon a oue glac'haret; senti a reaz goulskonde, hag ee'h en em lakeaz da ziouall an denved, met er memez amzer ne ankoumae'hea ket Doue.

E traon ar menez, el leac'h ma kase peurvuia he loened, e oa eur japel en honor da zant Nikolas; en diabarz e oa eun imach d'ar Vere'hez. Remon en em denne aliez er japel-ze da bedi. Ar vesaerien divar dro he ziskuillaz d'he dad abalamour ma tileze he zenved. An

tad o veza eat betek Remon, her e'havaz o pedi er japel; met e kichen al loened e velaz eur paotrik iaouank. An tad a zonzaz: « Ar paotr-ze a dle beza eal va mab », mont a reaz eta da vriata Remon gant karantez, en eur bedi anezan da genderc'hel.

Remon a e'houennaz neuze digant ar Vere'hez sklerijen var an hent a dlie da heuill. An Itroum Varia a lavaraz d'ezhan e goled; he galon: « Kea en Urz savet da brena ar gaptived. » Senti a reaz raktal, ha tri bloaz divezetoc'h, sant Per Nolask her e'hasaz d'an Afrik. Ar zant a brenaz eur maread prizoumerien, hag evel na e'helle ket prena an oll, e chomaz e kred evit ar re na e'helle ket paea evitho.

Choum a dlie e renk ar sklaved, betek m'o dije ar bri-zoumerien savet er gear, ha digaset da Aljer arc'hant aoualc'h evit paea ranson an oll.

An dud karget da ziuall ar zant a oue kriz meurbet en he genver; met gant aoun na varvje etre ho daouarn, e oue goure'hemennet d'ezo, a benn eur pennad, beza guelloc'h evitan; lezet e oue zoken da redet dre gear. Neuze Remon a iezaz betek ar gaptived nevez en em gave bemdez er vro, evit ho e'honsoli hag ho e'hrenvât er feiz; er memez amzer e poanie da e'hounit an Turked da Zoue, ha da rei d'ezo ar vadiziant. Ar gouarner o veza klevet kement-se, her e'houndaonaz da reseo taoliou baz var plantou he dreid, met kement-se na viraz ket outan da gendele'her da brezeg.

Diskuillet e oue a nevez. Neuze ar gouarner a roaz urz da doulla d'ezan he ziu vuzell; eur potaillik houarn a ziellaz da e'houde ar ginou evit miret ouz ar merzer da gomz: taolet e oue ouspenn-ze er prizoun. Pemp miz goude eun hevelep iadazerez, ar relijiuzed en em gavaz evit paea ransoun an oll, ha tenna ar zant a boan. Remon a oa joa gantan gouzanv evit Jesus-Christ; karet en devije achui he vuez er vro-ze; met senti a reaz ouz he zuperior, en eur lavaret: « Guelet a ran ervad n'oun ket » din euz kurunen ar verzerien; met da viana, va Zal- » ver, resevit va daelou, pa ne veritan ket skuill va goad » evidoc'h. »

P'en em gavaz ar zant er Spagn, ar pab Gregor IX her greaz kardinal; hag, evel ma e'hoantea he velet hag her e'haout en he gichen evit reseo he guzuliou, ar pab her galvaz da Roum. Met Remon a gouezaz goall glanv e Kardoan. Ar beleg a oue klasket, met n'edo ket er gear. Remon a reaz neuze eur beden kalounek da Zoue; guelet e oue raktal er gampr eur sklerijen gaer hag a badaz eun hanter-heur: Remon a oa bet kommunit gant eun eal. Evelse e rentaz he ene da Zoue, er bloaz 1240, d'an oad a 36 bloaz.

Evel na e'hellet ket en em glevet divar benn al leac'h ma vije enterret ar zant, e oue lakeat he gorf en eun arched var gein eur mul dall, en eur lavaret e vije enterret el leac'h ma chomfe ar mul a zav. Hogen, goude beza great eur pennad mad a hent, ar mul a joumaz a zav eharz dor chapel Sant-Nikolas, el leac'h m'en em denne Remon, en he iaouankiz, da bedi ar Vere'hez, endra ma veze o tiouall an denved. Eno e oue lakeat he gorf.

SONJOMP ERVAD :

Epad ma veze Remon o pedi, eun eal a ziualle he zened. Ho tevosionou, ma rit anezo gant furnez, e leac'h noazout d'ho labour, a denno bennoz Doue varnoc'h, var hoc'h oberou, ha var kement tra oc'h euz.

AN DEVEZ KENTA A VIZ GUENGOLO

Sant Arzel pe Armel, Abad

Ar zant-man a zo ganet e Bro-Zaoz, e tro ar bloaz 482: he dud a oa pinvidik ha kristenien vad, dioc'h ma lavar ar skridou koz. Ar paotrik a oue lakeat er skol gant menec'h gouiziek, setu ma teuaz, e berr amzer, da

veza desket brao ha devot-braz. Pa oue achu he studi gantan, Arzel a zistroaz d'ar gear, met e leac'h en em rei d'ar bed e c'houlennaz mont da veleg, hag he dud a roaz ho asant d'ezan. Beleget e oue eta, hag e roaz skouer vad d'an oll, muioc'h e'hoaz eget araok, met ne gave ket d'ezan e rene eur vuez parfet aoualc'h, hag e reaz he zonzj da guitât he vro hag he dud, evit mont da veva he-unan gant Doue.

He dud, glac'haret, a roaz goulskoude ho asant en dro-man e'hoaz, hag ar beleg santel a glaskaz eur vag evit treuzi ar mor. Eum nebeut paotred iaouank, c'hoant d'ezo servicha an Aotrou Doue eveldan, en em glevaz gantan: douara a rejont oll e bro Leon, en eun haor hanvet abaoue an Aber-Ildud. Tec'het a rejont eun nebeut euz ar mor, evit gellout beva didrousoc'h, hag e choumjont el leac'h m'ema breman bourk Plouarzel.

Eno an dud santel a zavaz lochennou, gant eun orator pe japel, hag a vevaz eüruz, o veuli Doue, oc'h ober pinijen, oc'h heuil ar reolen a vuez a roe d'ezo Arzel, met ar zant ne jounaz nemeur ganto. E bro Leon a bez e oa brud euz a zantelez an abad iaouank, setu ma oue galvet e Paris evit sikour ar roue Childebert da zibuna eur guden goall-rouestlet. Eum toulladik Arvoriz a oa dija en em vodet en dro d'ar gouent: eaz e oa beva tost d'ar venec'h; Arzel a lakeaz Karenkinal da ren ar gouent en he leac'h, hag a ieaz da Paris.

Ar roue a zelaouaz an abad, hag a glaskaz zoken miret evit atao Arzel en he gichen, met ar zant n'en doa ket lavaret kenavezo d'he dud ha d'he vro evit mont da reseo henoriou e lez ar rouaned, hag a zistroaz da Vreiz.

En eur zont kuit euz palez Childebert, Arzel a rentaz ar c'herzet d'eun den seizet hag ar guelelet d'eun den dall; var he hent e pareaz, dre ma 'z ea, eur maread tud klanv, digaset d'ezan gant ho c'herent. En eur geraden hanvet Loutehel, en eskopti Roazon, ne oa ket a zour mad da eva: ar zant a zankaz eno he vaz en douar, a reaz eur beden da Zoue, ha pa dennaz he vaz, e savaz eun eienen hag a red an dour anezi hirio e'hoaz: hanvet eo zoken feunteun sant Arzel.

Evit plijout da roue Breiz, Arzel, e leac'h distrei e goueled Leon, a jounaz demdost da Roazon, var eun dachen roet d'ezan gant ar roue-ze. Eno e reaz sevel adarre eur japelik ha lochennou tro var dro, hag e roaz eur reolen a vuez d'an dud a c'hoantea dont da veva dindannan, er beden hag er binijen. Dioc'h ma lavar an historiou koz, tud ar vro-ze a oa spountet gant eur zarpant braz hag a rea kalz drouk: Arzel a ieaz da glask al loen heuzuz en he doull, a stoliuz anezhan hag a c'hourc'hemennaz d'ezan, en hano an Aotrou Doue, mont d'en em daoler er ster a rede e kichen eno: beuzet e oue.

An dud a rea hano aliez euz an abad santel var dro he gouent hag e kear Roazon, setu ma teuaz Arzel da bellât eur vech muioc'h diouz ar bed, evit mont er c'hoat braz a oa d'ar mare-ze e kalon Breiz-Izel, hag a oa hanvet ar c'hoat Douma.

Sevel a reaz adarre eur japel ha lochennou, tud a ziredez da veva gantan, laouen oc'h heuil he reolen a vuez, lod all a zeuaz, a nebeudou, da joun en dro d'ar gouent, hag ar geriadennik a zo deut, gant an amzer, da veza kear; hanvet eo Ploermel, dioc'h hano ar zant; (**Plou-Armel**): eno e veze great Armel anezhan.

Erfin, dinerzet gant he labourou hag he binijennou, Arzel a gouezaz klanv. Eun eal a ziskleriaz d'ezan pe da zeiz e tlie m'fvel, ha goude beza resevet, he zakramanchou gant eur garantez birvidik, ar zant a rentaz he ene kaer da Zoue, er bloaz 552.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a zo bet eüruz, abalamour m'en deuz Doue diskleriet d'ezan pe da zeiz e varvje, met eürusoc'h eo c'hoaz an neb a vev atao e stad da vervel santelamant. Ma oufemp n'or befe nemet eur miz da veva, pebez soursi n'on defe-ni ket da gaout eur maro mad? Ha marteze n'on deuz ket eur zizun, na memez eun devez!

† † †

AN EIL DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Stephan, Roue (979-1038)

Ganet var dro ar bloaz 979, ar zant-man, savet mad gant he vam dukez Hongri, a bignaz var tron an duked d'he ugent vloaz.

Kenta a reaz, a oue gervel misionerien evit sklerijenna darn euz he zujidi a oa paianed c'hoaz; sikour a reaz ar visionerien hervez he c'halloud. Pennou braz ar baianed, douget d'ho idolou, en em zavaz enep ho duk; eur c'halz euz ar zoudarded a droaz ganto.

An duk iaouank a iunaz, a reaz aluzennou braz ha pedennou hir, met goude beza goulenmet sikour Doue, e savaz var he varc'h brezel, hag e ieaz dispount d'an emgann. He ofiserien a grene, rak an enebourien a oa niverusoc'h ha krenvoc'h; en despet da-ze, ar gounid a joumaz gant Stephan.

Divar neuze an duk iaouank a boaniaz muioc'h c'hoaz da ziarbenn ar falz kredennou, da derri ar-gizioù fall, da ober d'an oll miret lezennou Doue. Mad e oa da zével ilizou nevez ha kouenchou, hospitaliou evit an dud klanv hag ar re baour, chapelioù kaer en honor d'ar Verc'hez Vari; eur vadelez benag a verke pep hini euz he zevezioù.

Pa oue diazezet mad he c'halloud, e kasaz kannadet d'an Tad Santel ar Pab: goulén a rejont, var he urz. eskoptiou en Hongri, evit ma vije easoc'h d'ar bobl servicha an Aotrou Doue; evitan he unan, ar prins santel a c'houlenne reseo digant ar Pab ar gurunen a roue.

* Ar Pab a asantaz laouen da oll c'houlennoù Stephan, kurunet e oue gant unan euz an eskibien, hag he bried Jisel, c'hoar da zant Herri, impalaer an Allemagn, a oue ive kurunet rouanez. Ar roue nevez a greskaz c'hoaz he

oberou mad, ne nac'haz biskoaz an aluzen ouz paour ebet; gant an dra-ze, e rea kement a binijen hag ar venec'h devota er c'houchou. He bedennou a oa birvidik, ha pa dlle mont da gommunia, e tremene an nozvez en iliz, o sonjal e Doue, hag en he garantez er zakramant.

Eun eontr da Stephan, duk an Transylvani, gant avi ouz he gurunen, a zaillaz gant eun arme vraz var an Hongri. Lavaret a rea: « Ar roue-ze a joumo da bedi » Doue, epad ma kemerin he rouantelez a bez. » Ar roue santel pa glevaz hano euz an enebourien, a c'halvaz huan he zoudarded hag he ofiserien, hag a ieaz he-unan er penn amaok. An enebourien a oue douaret, hag ar zant a drugarekeaz Doue.

An eontr-se a zeuz en dro meur a vech, gant eur arme nevez bep taol. E leac'h koll kaloun, Stephan a zifennaz he rouantelez; eun devez emgann, e pakaz he eontr gant ar peb brasa euz he ofiserien; neuze, evit kaout eur peoc'h paduz, e tiskleriaz da dud an Transylvani e oant hiviziken he zujidi.

Treac'h e oue c'hoaz da veur a brins all a glaskaz trabas outan, rak he zeveuriou a gristen ne virent ket ouz Stephan da ober he zeveur a roue penn-da-benn: evel sant Lois, roue Frans, skouer an oll rouaned, sant Stephan a oue eur roue braz, abalamour ma choumaz atao kristen mad.

Goude beza renet he vro gant ar brasa evez, ar roue santel a gouezaz klanv, hag a joumaz tri bloaz var he vele; Doue en doa c'hoant da rei d'ezan, er baradoz, eur gurunen euz ar re gaera. Gouzanv a reaz he boan gant pasianted; ha mervel a reaz er bloaz 1038, deiz gouel Hanter Eost, goude beza lakeat he rouantelez hag he dud dindan skoazel er Verc'hez Gloruz Vari.

SONJOMP ERVAD :

Ar roue santel-man a zo hanvet gant guirionez Abostol an Hongri, abalamour d'he aked da ober d'he zujidi trei kein d'an idolou evit beva e guir gristenien. Eun tad a famill a c'hell beza hanvet ive Abostol he diegez, gant ma raio, en dre d'ezan, al labour a reaz sant Stephan. Ar roue kristen-

ze a roaz d'he bobl ar skoueriou kaera evit he gentelia, sikour a reaz an oll da vale var hent an env. Tadou a familh, ha ne c'hellit-hu ket ober kement-se en ho ti? Ha ne c'hellit-hu ket rei skoueriou mad, kenteliou santel? Ha ne c'hellit-hu ket kas ho tud d'an offisou, d'ar c'hatekiz, lakât an urz da ren en ho tiegez? Hag hen ober a rit-hu?

AN TREDE DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Fiakr, Ermit

Mab hena da Eujen IV, roue Skoss, Fiakr a oue savet gant eun eskop, hag a reaz anezan eur paotr desket ha fur. E leac'h kaout avi ouz ar gurunen aour a dlie beza d'ezan, dre vir, goude maro he dad, Fiakr a reaz he sonj da c'hounit eur gurunen gaeroc'h er baradoz: hag eun devez, heb lavaret netra d'he dud, e tec'haz euz ar gear gant he c'hoar Sira. Mont a rejont, dre vor da genta, dre zouar da c'houde, betek ma tigouezjont en eskopti Meaux, renet neuze gant sant Faron. An eskop santel-ze a lakeaz Sira en eur gouent vraz, eno e servichaz Doue gant eur maread leanezed devot.

Fiakr a c'houlenne eul leac'h gouez ha distro, an eskop her c'hasaz d'eur c'hoat braz: eno ar paotr iaouank a zavaz eur ermitach, hag a oue lakeat gantan dindan skoazel ar Vere'hez Vari. Gant aon da veza touellet da ober re a stad euz he gorf, an ermit a reaz d'ezan eur brezel ker kriz, a gastizaz kement anezan dre ar iuniou hag ar pinijennou a bep seurt, ma ne oue dizale nemet ar relegou anezan. Met seulvui e simplea he gorf, seulvui e krenvea he spered, hag e tiredaz buan vardro an ermitach eur maread tud klanv: sant Fiakr ho faree oll.

O veza ma teue kement a dud da c'houlenn ar iec'hed digantan, kement a bardounerien d'en em erbedi outan, ar zant a ieaz da gaout sant Faron, hag a c'houlennaz

digantan kreski al liorz a oa e kichen he ermitach, evit ma c'helfe maga muioc'h a dud. An eskop a respountaz: « Ar c'hoat m'emaoc'h ennan, a zo oll d'in, kemerit anezan al loden a c'helloc'h da gloza en eun devez. »

Ar zant, eur vech distro d'he ermitach, a gemeraz eur vaz pe eur bal, hag a ieaz dre ar c'hoat en eur zele'her ar bal adreñv he gein: dre ma 'z ea, an douar a zigore anezan he-unan.

Eur vaouez divar dro eno, o velet ar burzud-man, a redaz da ziskuill da zant Faron e oa Fiakr eur sorser; da c'houde, e teuaz da lavaret an traou goasa d'ar zant. Fiakr ne respountaz ket an disterra ger trenk; p'en em gavaz an eskop, hja pe velaz al labour a oa bet great, e veulaz an ermit santel, ha divar neuze, en devoue muioc'h c'hoaz a respet hag a garantez evitan.

Pa varvaz roue ar Skoss, an eil kosa euz ar vugale a oue savet var an tron, pa 'z eo guir ar c'hosa, Fiakr, a oa tec'het pell. Ar roue nevez ne valeaz ket gant an hent eün, evel he dad; trei a reaz kein d'ar relijion gatolik evit heuil heresi ar Peliajaned, ha koueza a reaz a nebeudou en dizursiou brasa. He zujidi, skuiz gantan, a lammaz digantan he gurunen, hag a daolaz anezan er prizoun. Neuze ec'h en em glevjont evit pedi Fiakr da zont d'ho ren: gouzout a reant e oa en eun ermitach en eskopti Meaux; kas a rejont evit-se, kannadet da Gloter III, roue Frans.

Doue a ziskuillaz d'an ermit santel baleou ar c'hannadet; hen neuze, gant aon da goll he ene var an tron, a bedaz hag a aspedaz an Aotrou Doue da viret na vije roue. Doue a zelaouaz he beden; kroc'hen ar zant a viskaz en eun taol liou an dud lor: heuzuz e oa da velet. P'en em gavaz ar c'hannadet, ha pa veljont an ermit, e ouent spountet ha nec'het braz.

Pedi a rejont evelato Fiakr da zistrei ganto da reseo kurunen aour rouaned Skoss, met ne bedjont ket stard: aon o doa n'en devije lavaret ia d'ezo. Ar zant a respountaz: « Ho trugarekât a ran, met n'ez in ket ga- » neoc'h; guell eo ganen choum em ermitach eget n'ez » eo reseo oll kurunennou an douar. Lor oun, dre c'hras » Doue, met evit eur pennad hebken. »

Ar c'hammadet a iecz d'ar gear, laouen-braz; ar zant a jeumaz, ken laouen all; dont a reaz heb dale da veza adarre kaer he flamm.

Mervel a reaz en he ermitach, leun a veritou, var dra ar bloaz 670.

SONJOMP ERVAD :

Nag a boan en deuz kemeret ar zant-man, evit ren eur vuez kuzet! Tec'het a ra euz ar gear da bell bro, laouen eo p'en em vel e renk an dud lor; en doare-ze en deuz gelllet beva he-unan gant Doue. Ha c'houi, heb mont da veva en eur c'hoat, ha karet a rit-hu sonjal e Doue pa vezit gant ho pedennou, en iliz pe er gear? Ha n'eo ket debret ho spered, neuze memez, gant ar zont euz traou ar bed-man? Goulennit digant Doue ma teufac'h da bedi guelloc'h.

AR PEVARE DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Santez Vennok, hanvet ive Kandid, Guerc'hez

Ar zantez-man a vez roet an daou hano d'ezi, abalamour ar skrivanierien koz, ar venec'h, a lakea e latin histor ar zent hag ar vro, hag e latin Guenn pe Venn a zo hanvet ive Kandid. Ar skrivanierien koz o deuz roet d'eomp eun diverra euz he buez.

Vennok, merc'h da Vroc'han, roue Bro-Zaoz, a oa gannet en enezen-ze. Badezet e oue gant sant Kolomba, eun abad devot braz, ha roet e oue da zevel da dud a zont-jans Doue. Vennok a oue a-vianik, humbl, modest, mad da zenti, da bedi ha da lenn levriou santel; selaou a reaz gant plijadur ha devoision an oferen hag ar prezegennout a veze great d'ezi; labourat a reaz pa ne veze ket en iliz, rak ne blijē ket d'ezi choum dibreder.

He gened, he danvez, he deskadurez a reaz da vab roue ar Skoss dont da c'houlenn anezi da bried. Ar roue

Broc'han a asantaz dioc'htu, lavaret a reaz evelato : « Gant ma plijo kement-se da Vennok, » hag e reaz he gervel dirazan. Vennok a respountaz : « En em voes- » tlet oun da Zoue, ha sonj a meuz da joum guere'hez » atao. Ar prins a zo oc'h va goulenn ne gavo ket diez, » mechans, e kafen guelloc'h beza da Jesus-Christ eget » beza d'ezan. » He zad a lavaraz neuze : « Laouen e » vefen bet oc'h eureuji ac'hanoc'h, met var eun dra » ker braz, e reoc'h ho polontez. »

Divar neuze, ar zantez a vezaz e ti he zud, evel eul leanez en eur gouent; pedi a reaz hirroc'h amzer c'hoaz, en eur zontjal peger mad eo Doue, ha pegement e plij d'ezan an eneo pur ha guere'h.

A benn eun nebeut amzer e sonjaz pellat diouz ar bed, ha mont da bell bro da zervicha Doue hebken, er beden hag er binijen. He zud a lavaraz nan da genta, met gant an amzer, var bouez pedi stard, Vennok a reaz d'he zud plega, hag a reaz kaoz da vont da ober he ermitach en tu all d'ar mor, e Breiz-Izel. O veza m'oa goasket en amzer-ze, Breiziz Bro-Zaoz gant pobladou tud gouez, ha ma oa dija tec'het meur a vagad da Vreiz-Izel, eur maread tud a c'houlennaz heuil ar vere'hez iaouank; en ho zontez e oa eskibien, beleien, ha ganto tud dimezet ha tud iaouank. Da zontjal kas kement a dud euz eur vro d'eben, e oa red kaout meur a vag vraz, hag al levriou koz a lavar d'eomp e oue seiz oc'h ober hent assemblez. E leac'h douara var aochou Leon, evel ar peb brasa euz an dud a deue euz Bro-Zaoz, Vennok a reaz tro Leon ha Kerne hag a zouaraz en tu all d'al Laïta, var zouar Ploemeur, demdost d'an Oriant.

Eno e oue savet eur gouent evit ar venec'h, ar gouent-se a joumaz en he zav epad meur a gant vloaz. Demdost d'ezo, ar zantez a iecz da veva gant eun nebeudik merc'hed iaouank; evelse, e oue eaz d'ezo kaout oferen, ha reseo ar gommunion zantel.

Lavaret a c'heller, e oue Vennok ar genta o ren buez al leanezed e Breiz-Izel, assemblez gant ar mere'hed iaouank o doa evel di, gueslet ho guere'hdet da Zoue, hag histor he buez a lavar d'eomp peger madelezuz eo bet ar brinsez evit tud ar vro-ze.

Beva a reaz var dro tregont vloaz en he c'houent, en eur ober miraklou braz, ha renta a reaz da Zoue he ene leun a veritou, goude beza resevet gant feiz he zakramanchou diveza.

Henoret eo e Scaer hag e Tourc'h, dindan an hano a zantez Kandid.

SONJOMP ERVAD :

Tri zra zo hag a goll an den: an ourgouill, an danvez, ar c'hig. Vennok a c'helle kaout he lod euz oll blijadureziou ar bed, rak bez' e doa gened, deskadurez, renk, madou braz, ha kinnig a reat dezi eur fortun gaer. Gant aon da goll he ene, e reaz veu evel an oll leanezed: kuzat a reaz he gened hag he deskadurez en eul leac'h gouez ha distro, beva a reaz paour goude beza dilezet an danvez e doa e ti he zad, roue Bro Zaoz, beva a reaz guerc'hez etouez merc'hed iaouank euz he oad. Pebez kentel evit eur c'halz tud a lavar: « Me » a garfe beza da Zoue, me ive, met na c'hellan ket. » Mar doc'h galvet e guirionez, daoust ha diesoc'h eo d'eoc'h eget na oa d'ar zantez-man?

AR PEMPED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Laurans Justinian

(1380-1456)

Ar zant-man a ziskouezaz, a vianik, e vije eun deiz eur zervicher braz da Zoue. En amzer ma oa c'hoaz krouadur e veille bepred var he gomzou; biskoaz na oue klevet an distera ger divalo o tont euz he c'kinou, hag ober a rea peb tra gant skiant eun den en oad.

Pa oue savet da baotr iaouank, Laurans a iez en eun Urz chalonied hag a veve divar an aluzen, en eur ober pinijennou rust. Eno, ar zant a gastizaz kement he gorf, ma rankaz he zuperior goure'hemen d'ezhan ober nebeutoc'h.

Daoust ma oa euz ar renk huela e Florans, Laurans a iea d'he dro da glask an aluzen, evel ar venec'h all. He vam, devet gant ar vez pa vele he mab o vont, dor a dor, evel eur paour keaz, e doa goure'hemenet grons d'he zervicherien: « Kargit d'ezhan he baner, bevech ma teuio dirak an ti. » Met ar zant, pa deue, na reseve netra en tu all da dri vara, euz ar gear: c'hoant en doa gouzanv, dirak Doue, ar vez en deuz atao eur c'hlasker boued hag a zo ganet pinvidik, pa rank mont da c'houlouen.

Keit ha ma oue relijiuz, na lakeaz biskoaz he dreid e ti he dud, nemet pa 'z eaz var dro he vam a oa klanv bras: sikour a reaz anezhi da vervel santelamant.

Eun devez ma 'z ea dre greiz eur blasennad tud, o reseo an aluzen evit ar gouent, ar manac'h a oa gantan a lavaraz d'ezan: « Ama ez euz re a bobl, eur vez eo evi- » don, hag evidoc'h dreist oll; klaskomp buan eur ru » tenvaloc'h ha siouloc'h. »

Met ar zant a respountaz: « Deomp var hor pasianted, » troet on deuz kein d'ar bed ha d'he henoriou, red eo » d'eomp merka dre hon oberou e oa guirion ar c'hom- » zou on deuz lavaret deiz hor profesion. Dougomp var » hor skoaz sam ar c'hlaskerien bara, Doue hon digollo » euz an tamik dismegans a vo taolet varnomp. »

Kaer en devoa tec'het diouz ar c'hargou hag an henoriou, e oue hanvet superior braz he Urz, ha divezatoc'h eskop e Veniz. Eur vech eskop, e kendalc'haz da heuill ar memez reolen a vuez, da ober pinijen, ha da renta servich d'ar paour. Nebeut a dra a zispigne en he di abalamour m'en devoa, emezan, kalz a vugale da zével da lavaret eo, kalz a beorien.

Petra benag ma sante he nerz o semplât var fin he vuez, ne felle ket d'ezan lezel an distera euz he labou-rou. Goude beza kanet an oferen da zeiz Nedelek, ec'h en em gavaz goall glanv. He zervicherien, o c'houzout e kouske bepred var ar c'halet, a bedaz anezan da jench guele; met respount a reaz d'ezo: « Jesus-Christ a zo » maro var ar groaz, hag e fell d'eoc'h e varfe var ar » plun eur pec'her evel don-me? »

Goude beza resevet he zakramanchou diveza, o velet

he zervicherien o vouela en dro d'ezan, e'h en em lakeaz d'ho e'honsoli, en eur lavaret: « Ar e'haera devez » euz va buez ne dle ket beza evidoc'h eun devez a zae- » lou hag a dristidigez. »

Nebent amzer goudeze, e rentaz e peoc'h he ene d'he Groner, er bloaz 1456, d'he e'houezek vloaz ha tri-ugent. He gorf, goude he varo, a joumaz epad 67 devez fresk-beo, araoak ma oue lakeat er bez.

SONJOMP ERVAD :

Laurans Justinian a oue devot en he iaouankiz; goudeze e oue eur guir relijiuz, hag erfin eun eskop santel. Doujans Doue en dud iaouank a laka peurliesa ar vuez hag ar maro da veza santel.

Eur blantenn iaouank, eün, ha savet en douar mad, eur vech m'e deuz great he griziu, a vella bepred hag a zeu kaeroc'h-kaera bep bloaz. Eur vezen laosket da gemeret eur pleg fall, a viro ar pleg-se keit ha ma pado.

Peger braz tra eo eta en em rei abred da Zoue, ha trec'hi ar goall-ioulou kerkent ha ma teuer d'ho anaout! Kentel gaer evit ar vugale! Kentel gaer evit an tadou hag ar mam-mou! Ar vugale a dle kemeret abred eur pleg mad, hag ho zud a dle ho zikour.

AR C'HOUECHVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Salomon, Patron ar Merzer

Hervez ar skridou koz, Nominoc, roue Breiz, a dre-e'haz ar Fransizien er bloaz 845 e kichen Redon; lavaret a e'helle da e'houde: « Roue oun, ha ne anavezan ken » mestr nemet Doue. »

He vab Herispoe a renaz var he lerc'h, er bloaz 851, met e'hoant en devoue da zimezi he vere'h gant mab

roue Frans, ha pennou braz Breiz a lazaz anezan dioc'h ma kreder, e chapel he balez, er bloaz 857: aon o doa da goueza adarre dindan galloud ar Fransizien. Var a leverer, Salomon a oa e penn araoak ar vuntrerien.

Salomon, kenderv Herispoe, a gemeraz ar gurmen a roue var he lerc'h. Pec'hi en doa great, rak eun torfed heuzuz eo laza eun den, eun torfed sakrilach eo he laza en eur japel; met rapari a reaz he bec'hed hed he vuez, he rapari a reaz zoken dre he varo.

Kenta tra a reaz ar roue nevez a oue diazeza mad he e'halloud dre he furnez hag he zouder; mad e oue da zervicha Doue, da veza leal ha trugarezuz e kenver he zujidi, madelezuz evit ar beorien. An devosionou a rea ne virent ket outan da lakât evez mad ouz he rouantelez: pa glevaz roue Frans, Charles Moal, **Charles le Chauve**, e oa bet lazet roue Breiz, e savaz buan eun arme evit diskar ar e'heariou braz, hag ober freuz er vro.

P'en em gavaz ar roue Charles var harzou Breiz, e kavaz eno arme ar Vretoumed prest d'an emgann, gant Salomon er penn araoak; ha roue Frans a iciaz buan, var he giz.

Er penn kenta, hiniennou euz ar e'homted a gave diez plega da Zalomon, d'eun den, emezo, hag a oa ruz-goad he zaouarn, met p'her gueljont ken humbl, ker santel, e teujont a nebeudou da zoubla d'ezan a vir galoun. Pa oue diazezet mad he e'halloud, ar roue a e'hoanteaz mont da Roum da gaout ar Pab Adrian II; sonj en doa da genta, da goves he dorfed d'an Tad Santel gant eur guir gontrision evit kaout ar pardoun anezan; d'an eil, goulenn a dlie m'o defe Breiziz eun are'h eskop en ho bro, e Breiz-Izel, rak kalet e kave guelet eskibien hor bro o vont da are'h eskopti Tours, doue er Frans; eno e oa ho are'h eskop d'ezo.

Salomon, arok diblas, a vodaz oll pennou braz an noblans hag an Iliz evit goulenn kuzul diganto, met oll e leverjont nan d'ar roue. « Ma 'z it breman diganeomp » emezo, ar Fransizien a zaillo varnomp dioc'htu, ha » ne vezo nemet freuz ha rouestl en hor bro: en han' » Doue, choumit er gear. » Ar roue a blegaz:

O veza na c'helle ket mont he-unan, ar roue santel a gasaz en he leac'h eun eskop, gant eun nebeudik tud ha kalz profou. Unan euz ar profou-ze a oa eur skeuden aour pur, euz a vent ar roue he-unan, guisket gant perlez; ouspenn-ze, eur gurunen aour flamm, ha kalz traou ker pinvidik all, pe dost.

Ar profou-ze a verk peger gallouduz, peger brokuz e oa roue Breiz, ha pegement a respet en doa evit an Tad Santel ar Pab.

Ma kase aour d'an Tad Santel, Salomon a oue mad ive e kenver ilizou ha kouentchou he rouantelez, rei a reaz kalz evit ho zevel, ho c'haerrât. Ren a reaz gant lealdet epad seitek vloaz, met tenna a reaz varnan kasouni ar re fall: re eün ha re leal e oa evit an oll, braz ha bian. O veza ma vire ouz hiniennou euz ar re vraz da voaska ar bobl, ar re-man en em zavañ en he eneb, hag a lazaz anezan er Merzer, er bloaz 874, goude beza da genta dallet anezan.

Ar vuntreien a zo bet sioul, goude maro ar roue, ha setu perak, n'ouzer ket mad aouale'h penaoz eo maro, met kristenien Breiz o deuz e peb amzer henoret Salomon egiz pa vije maro evit ar feiz, hag an iliz a zo bet savet var he vez a zo hanvet iliz ar Merzer.

SONJOMP ERVAD :

Jesus a lavar en Aviel: « An nep a skoio gant ar c'hleze, » a varvo dre ar c'hleze. » Ar c'homzou-ze a zo deut da vir evit ar roue-man, met eüruz eo bet: great en deuz eur guir binijen, raparet en deuz. Goulennomp digantan ma sikouro ac'hanomp da rapari, ni ive, hor pec'hejou tremenet.



AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Santez Roza a Viterb

(1235-1252)

Buez ar zantez-man a zo burzuduz penn da benn, diskouez a ra d'comp peger braz eo galloud Doue, pa 'z eo guir e ra avechou an traou brasa, an traou kaera dre zourn ar re zistera euz an dud.

Ganet er bloaz 1235, Rozik, d'he zri bloaz e doa skiant ha santelez eun den braz, ober a rea dija burzudou ; eun devez ma oa eur voereb, d'ez i var ar varvskaon, Roz a c'halvaz anezi dre he hano, ha kerkent ar voereb a zavaz euz a varo da veo.

D'he zeiz vloaz, Roza a c'houlennaz beza resevet en eur gouent. Al leanezed a ouie ervad e doa Roza brud da veza eur verc'h santel, na gredjont ket, evelato, digemeret eur c'hrouadur. Hi neuze, pa 'z eo guir ne c'helle ket mont etouez al leanezed, a vevaz en he zi evel en eur gouent. Choum a rea tri devez ha betek seiz devez dioc'htu heb dibri an distera tam, o kastiza he c'horf betek ar goad gant fouetou kaled, o tougen heb chan gourizou reun.

Eun devez, eiz vloaz hanter e oa neuze, skuizet gant he finijennou ha gant eur c'hlenved a badaz meur a viz, e oue galvet an amezeien da zont var he zro: kredi a reat edo o vont da dremen. A greiz pep tra, setu Roza var zao: « C'houi oll a zo ama, emezi, saludit rouanez en env, » daoust ha n'her guelit ket? » Hag hi ha sevel prim, ha koueza d'an daoulin. He daoulagad a oa digor braz, hag e selle euz he oll ene mam Doue en eur sklerijen skeduz. Ar re all ne velent nemet Roza sklerijennet, hi a vele gloar Mari ha tro var dro d'ar rouanez gallouduz ha skeduz, e vele eur marcad guere'hezad eüruz ha laouen.

Ha Roza a oue klevet o lavaret: « Va rouanez benniget, » va levenez, va eürusdet, mar oc'h euz eun dra benag » da ziskleria d'in, komzit. »

Ar Vere'hez Vari a respountaz: « Va merc'h Roza, » guelet a rit ac'hanoum guisket kaer, c'houi, lakit ive » ho tillad braoa, hag it da iliz Itroun-Varia ar Reun, » éno e viskoc'h sae an Trede Urz. Da c'houde e tis- » trooc'h d'ho kampr, divezatoc'h e prezegoc'h, ha goaz » a ze d'ar re a rei goap ac'hanoc'h, pe ne zentint ket ou- » zoc'h. » Hag ar Vere'hez Vari a ieaz kuit. Roza a zentaz, guiska a reaz sae Trede Urz sant Fransez.

Divar neuze he buez a oue kaletoc'h c'hoaz eget araok, rak guelet a rea aliez Jesus-Christ astennet leun-c'hoad var eur groaz, ha c'hoant e doa da veza henveloc'h bende- dez ouz Hor Zalver; met prezeg a rea d'an dud evit senti ouz Doue, hag he frezegennou a zougaz kement a fronez, ma teuaz gouarner kear da gaout aon razi.

Viterb a oa neuze dindan galloud an impalaer Frederik II. Tud kear o doa troet kein d'ar Pab evit plega d'an impalaer, ha prezegennou Roza a rea d'an dud trei- gant ar Pab, ho mestr dre vir. Gouarner kear a lavaraz da Roza: « Ehan da brezeg, pe me da daolo er prizoun. » Ar zantez a respountaz: — « Arabad eo d'eoc'h sonjal » e sentin ouzoc'h, rak an Hini en deuz goure hemennet » d'in prezeg a zo kalz galloudusoc'h evidoc'h. » Ar gouarner ne gredaz ket taoler Roza er prizoun, ar bobl en dije torret an or varni; setu ma reaz taoler anezi, hag he zud ganti, er meaz euz kear, er penn kenta a viz kerzu euz ar bloaz 1250.

Betek neuze Roza e doa bet poan spered meur a vech, rak darn euz he c'henvroiz o doa goapeat anezi pa bre- zege, met kalet e oa eviti beza taolet er meaz euz he zi hag euz he c'hear, kalet eviti guelet he zud o kaout poan ganti. Herzel a c'hellaz evelato oc'h ar ienien, daoust ne doa nemet dek vloaz hanter, ha ma oa teo an ere'h var an douar. N'en em glemmaz ket: sonj e doa euz ar Mabik Jesus e kraou Bethleem.

Roza, kaset kuit euz Viterb, a brezege er c'heriaden- nou dre ma 'z ea, hag ar miraklou a rea a zonge an dud

d'he zelaou ha da zenti outi. Frederik a varvaz d'an 13 euz ar miz-se, en dervez m'e doa diskleriet Roza, ha kerkent Viterbiz a bedaz ar zantez da zistrei en ho zouez: kas a rejont kuit an hini ho gouarne en hano an impalaer. Beva a reaz he-unan gant Doue epad 7 vloaz en he zi, ha d'ar 6 a viz meurs 1252 e rentaz he ene glan da Zoue: ren a rea he zrivac'h vloaz.

SONJOMP ERVAD :

Nag a vez a dlefe kaout an dud deut var an oad, pa zon- jont peger kaer kurunen a zo roet er baradoz da hiniennou ha n'int bet var an douar-nemet bugale.

Santez Roza, maro iaouank flam, a oa gouskoude karget a veritou; ni, petra reomp evit an Aotrou Doue?



AN EIZVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Ginivelez ar Verc'hez Glorius Vari



Miromp an devez eüruz m'eo ganet ar Verc'hez Dinam, miromp ar gouel-man gant ar brasa levez. E kenver an deiz-man, eme zant Bernard, Doue a skuillaz var an dud ar c'haera euz he c'hrasou; Mari eo ar stereden lugernus gortozet epad pell amzer gant ar batriarched hag ar bropheted; dirazi e rankaz tec'het an denvlijen a c'holoe ar bed oll, abaoue ouspenn pevar mil bloaz. Miromp, eme sant Ian Damasen, ginivelez an Hini e deuz chenehet e levez an dristidigez e devoa digaset d'comp Eva, hor mam genta.

Kemeromp perz eta er joa en doa an env pa oue ganet ar Verc'hez Sakr, galvet da veza mam Salver ar bed, ha rouanez an env hag an douar. Bezomp laouen pa 'z eo guir da genver an deiz-man eo ganet evidomp, an hini a dle beza ar guella dreist an oll vammou, hor brasa

esperans goude Jesus-Christ, hon alvokadez gallouduz dirak he Mab; en eur ger, hor peoc'h, hor joa, hor gloar hag hor c'honsolasion.

Ar grouadurez eüruz-man, gloar an env ha joa ar bed oll, karget a c'hrasou dispar kerkent ha ma oue kronet gant Doue, a oa kaer-dreist he ene da zeiz he ginivelez. Sant Joachim, he zad, ha santez Anna, he mam, a oa an daou zen zantela euz ho amzer; ne oant ket evit guir anavezet dre ho madou ha dre ar renk a zalc'hent er bed, met sant Joachim a ziskenne euz a lignez ar roue David, ha santez Anna euz a ouen ar veleien. Choumet e oant, var a leverer, ugent vloaz heb krouadur, ha ne ehanent da bedi Doue, o c'houlen he vennoz varno; Doue a zelaouaz ho feden.

Ar Verc'hez benniget a zo ganet d'an eiz a viz guengolo; en devez-se eo e tigoraz al lilien gaer-ze, a ra levez euz ar baradoz. Eiz dez goude he ginivelez, ar c'hrouadur a oue harvet Mari, da lavaret eo Itroun, Rouanez, Stereden; hi ne doa ket, evel ar vugale all, ezom da veza goalc'het euz ar pec'hed orijinel; konsevet e oa bet Dinam. Pevar-ugent devez goude ar ginivelez, santez Anna a 'z eaz da c'houlen bennoz ar beleg, ha da ginnig he c'hrouadur da Zoue e templ Jerusalem; met Mari en em ginnige er memez amzer. Bez'e deuz bet digant Doue, kerkent ha m'euz bet anezi, eme an doktored, skiant hag anaoudegez eun den e bar he vrud: dastum a c'helle ha dastum a reaz meritou abaoue he c'honsepsion dinam, betek deiz he maro. Rak-se eta, epad ma oa kinniget gant santez Anna, ar Verc'hez en em roe he-unan d'he C'hrouer; birvidikoc'h karantez e doa dija evit Doue, hueloc'h santelez eget ar zent brasa var ho zremenvan.

Mari, eme zant Bernard, a zo eur stereden gaer ha lugernuz savet dreist mor braz ha danjeruz ar bed; an nep a goll ar guel euz ar stereden-man, a zo e riskl da fazia var an hent mad, da steki ouz ar c'herrek, ha d'en em goll.

Mar fell d'eoc'h, eme ar memez sant, miret na 'z afae'h da goll, sellit ouz ar stereden-man, galvit Mari d'ho sikour; mar doc'h goasket gant ar goall-ioulou, sellit ouz

ar stereden, ha lavarit gant fizians hano santel Mari. An hano a Vari, eme sant Anton a Badou, pa deu e'houek var muzellou eun den, a zo aouale'h evit rei d'ezan nerz ha fizians, dousoc'h eo d'ar ginou eget ar mel, n'euz netra guelloc'h da glevet, netra kaeroc'h evit laouenât ar galoun.

SONJOMP ERVAD :

Pegen eüruz e vezin-me, a lavare sant Gregor a Nazianz, mar gellan kaout em ginou an hano santel a Vari, pa zigouezo d'in mervel! En eur lavaret an hano a Vari, e sonjan ez eo mam Doue, ha va mam d'in-me; sonjal a ran em euz eun alvokadez dirak va Zalver, hag eun difennourez galouduz dirak va barner; pa lavaran an hano a Vari e teu va c'haloun da denerât e kenver eur vam ken dous ha ker mad. Jesus ha Mari, setu an daou hano na ehanin da lavaret epad va buez, evit gellout ho lavaret easoc'h, var va zremen-van, evit sonjal enno c'hoaz, pa na c'hellin mui lavaret an disterra komz.

AN NAVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Per Klaver, Jezuist

(1582-1654)

Ar zant-man a oa ganet er c'houezekved kantved, er Spagn, a dud a lignez huel hag a zoujans Doue.

Kaset e oue da ober he studi da Vologn. Er skol vraz-se e renaz eur vuez pur, en despet d'ar skoueriou fall a roe meur a hini euz ar skolaerien. Echu he studi gantan. Per a zonjaz en em rei da Zoue; resevet e oue en Urz an Tadou Jezuisted e Tarragon. Er gouent, Per a gavaz eur **Frer**, mignoun braz da Zoue, hanvet ar **Frer** Rodrigez, plijadur en doa o komz gantan euz a draou an env. Eun devez, a greiz ma oant ho daou o pedi, Doue a blijaz gan-

tan rei da Alphons Rodrigez eur guel euz ar baradoz, hag euz ar plasou kaer meurbed a zo eno. An oll plasou a oa kemeret gant ar zent, nemet unan, hag a oa kaeroc'h eget ar re all. Alphons ne ehane da zellet, hag en eur drei varzu he eal gardien a oa en he gichen, e c'houlennaz digantan evelhen: « Da biou eo miret ar plas kaer-ze? » « D'ho mignoun Klaver, eme an eal. » Hag e lavaraz c'hoaz: « Gounit a raio ar gurunen gaer-ze, en eur zavetei kalz » a eneou en Amerik. »

Divar neuze ar **Frer**, sklerijennet gant Doue var al labour a dlie beza great gant Klaver, a boaniaz da lakât, e kaloun an Tad iaouank, eun ioul braz da gas sklerijen ar feiz d'ar vorianed divadez en Amerik. Entanet he galoun gant komzou ar **Frer** Alphons, Klaver a c'houlennaz mont, hag a oue kaset etouez ar vorianed.

E Karthajen eo e tigueuzaz, eno e labouraz. Ar vorianed-se, great sklavourien en Afrik, laeret pe baket er brezel, a veze taolet en eun doare didruez var douarou an Amerik. Goude beza gouzanvet bep seurt poaniou heuzuz aberz ho mistri dinatur, taolet ha distaolet var al listri mor, ruillet ha diruillet evel marc'hadourez epad ar veach, e vezent prizouniet kercent ha m'o deze douaret en Amerik; n'o doa nemed hanter voued da zibri, heb tam dillad koulz lavaret, hag evit gouele an douar noaz, da c'hedal beza guerzet evel loened.

Hiviziken, Per Klaver a vezo tad an dud keiz-se, ha ne ehano da bourvei d'ho ezomou, ha d'ho c'honsoli en eur stad ken truezuz. Pa veze guelet listri ar vorianed o tostât ouz porz Karthajen, an tad Klaver a rede raktal da gaout an dud keiz: boued hag evach a bep seurt gantan. Ne esperne netra evit dousât ho doare poaniuz, met ma pourvea da ezomou ho c'horf, e soursie muioc'h c'hoaz euz ezomou ho ene. Kenta tra a rea p'en deze torret naon he vorianed, a oa ho sklerijenna var guirioneziou ar relijion gristen; divar neuze e veze guelet eur c'halz anezo o c'houzanv ho foaniou gant pasianted. Ar re anezo a oa dare da vervel, a reseve gant sklerijen ar feiz, gras a vadiziant. Noz ha deiz ne ehane da gelen he vorianed, ha da rei d'ezo, pa veze red, ho zakraman-ehou.

Ne oa ket bet e'houec'h vloaz e Karthajen m'en doa great kristenien euz an oll vorianed. Ar re-man, eur vech gounezet a bez d'ar feiz katholik, a gemere oll amzer ar misioner kalounek; azalek ar mintin betek an noz e choume en iliz, hag aliez, pa zeue ar pardaez, e veze ranket he zevel, semplet gant ar skuider en he gador-govez.

Ar zant-man a varvaz gant eun derzien vraz, er bloaz 1654, d'an eiz a viz guengolo, ha d'an oad a zaouzek vloaz ha tri-ugent. Tri bloaz goude he varo, pa oue toullet var he vez, e oue kavet he gorf fresk-beo atao.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz poaniet, labouret, hag uzet he nerz o sikour ar re baoura euz an dud, ar vorianed kouezet er sklavach. Pebez kentel evit eur c'halz tud ha na fell ket d'ezho taoler eur zell a drugarez var ho nesa, ne garont ket kemeret an distera poan evitan. Heb mont d'ar broiou pell da entent ouz an dud paour ha dister, daoust ha ne c'hellit ket, meur a vech, rei skoazell d'an amezeien, sikour eun tiek disteroch evidoch, skoet he dud gant ar c'hlenved. Hag hen ober a rit-hu a galoun vad? Evelse eo e c'hounezoch ho kurunen er baradoz.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Nikolas Tolantin (1244-1305)

Tad ha mam Nikolas, dimezet pell braz a oa, a joumaz pell dizher: pedi a rejont sant Nikolas, eskop Mir, ha pa roaz Doue eur c'hrouadur d'ezo, e resevaz hano an eskop santel, er bloaz 1244. Hor zant a vez great Tolantin anezan, euz hano ar gear m'eo bet pell enni o choum.

Savet devot gant he dud, Nikolas a ieaz d'he unnek vloaz d'ar gouent : epad ma teske skianchou ar bed, e

poanie da anaout, dreist oll, skianchou Doue. D'he bemzek vloaz, setu ama ar piniennou a rea: dougen a rea atao eur porpant reun, gant eur jaden houarn var he groaz-lez. Iun a rea pevar devez er zizun; en tri devez all, ne zebre nemet eun tam bara, gant eun nebeut irvin pe garottez; kousket a rea var an douar noaz, gant eur mean evel penn vele.

Ar vuez piniennuz-se a reaz aon d'an drouk-spered, rak ar zent a zavete seulvui a eneon, ma kemeront muioc'h a hoan evit Doue; setu ma reaz an diaoul da zuperior eur gouent all mont da gaout Nikolas.

Ar zuperior-ze, kar tost da Nikolaz a lavaraz d'ezan: « Va niz, en em skuiza a rit re. Oc'h ober piniennou » ken rust ha ma rit, e kolloc'h ho iec'hed, ha ne reoc'h » vad ebet d'an eneon; denit ganen, em c'houent e re- » noc'h eur vuez easoc'h, hag e c'helloc'h evelato gou- » nit ar baradoz. » Ar manac'h iaouank, goude beza selaouet kenteliou he eontr, a ieaz d'ar japel, hag a c'houlemmaz digant Jesus: « Mont a dlean gant va eontr, pe » joum ama, e Tolantin ? » A greiz ma pede a vir galoun e velaz elez dindan furn bugale guisket e guen, kana a reant en eun doare dudiu, ar c'homzou-man: « E To- » lantin eo e tleit choum; ama eo e reoc'h ho silvidigez. » Divar neuze, Nikolas ne oue mui nec'h et.

Beleget e oue, ha souezuz eo pegement a vad a reaz d'ar vugale ma rea katekiz d'ezo, d'an dud a deue da goves gantan, d'an anaoun euz ar purkator a c'houlenne sikour he bedennou: ar bec'herien vrasa a lakea aliez da jench buez.

An diaoul, kounnaret o velet pegement a eneon a veze diframmet diouz a dre he skilfou, a glaskaz neuze spounta ar zant, evel ma reaz divezatoc'h evit persoun santel. Arz: guech e iude evel eul leon, guech e vleje evel eun eujen pe eur vloc'h, guec'h e fic'he evel eun aer bilimuz. Avechou e rea, e kreiz an noz, kement a drouz ha kant toer o labourat asamblez var eun doen, avechou all treuzier, plench, kebou ha koublou kam a strake hag a'orjelle evel pa vije bet ar gouent oll o freuza; met ar zant ne rea van: anaout a rea ardou an diaoul. Pa zeue goulou-deiz,

Nikolas souezet, ne vele en nep leac'h nag eur faout nag eun torr. Eun dro benag, an diaoul a skoaz varnan gant eur penn baz teo ha kalet, neuze e veze broustet oll korf ar zant, ar goad a rede zoken, ha divar an nosveziou-ze e choume klanv; met an diaoul ne c'houmeze netra: ar zant a gendalc'he da ober pinijen ha da zavetei eneou.

N'euz kount ebet d'ar burzudou a reaz Doue dreizan, rak Doue a zo, evel pa lavarfet, mevel gant he vir zervicherien: mervel a reaz var dro ar bloaz 1305, en eur lavarret ar c'homzou-man: « In manus tuas, Domine, commendo spiritum meum: Etre ho taouarn, va Doue, me a laka va ene. »

DARN EUZ KENTELIOU SANT NIKOLAS

I. — Ar galoun e deuz tanveat eur vech plijadureziou an env, ne gav saour ebet gant traou an douar.

II. — Penaoz e c'hell kemeret nec'h ha melkoni er bed-man, an nep a zervich Doue a greiz kaloun?

III. — An avaristed a lavar, pa vez hano euz an arc'hant: « Seul-vui, seul-c'hoaz; » guir zervicher Doue a lavar ar memez tra, pa vez hano euz ar boan: « Seul-vui, seul-c'hoaz. »

IV. — Hor poaniou d'eomp a goll ho drean, pa zonzomp e Pasion Hor Zalver.

V. — Peger herr eo ar boan; pegen hir an eürusdet eternal!

SONJOMP ERVAD :

Doue a ro, alies, eun tamik galloud d'an drouk-spered evit senti an dud; an dentasion a zikour an den da c'hounit eur gurunen gaeroc'h er baradoz, ma choum fidel da Zoue.



AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

An Tad eürus Gabriel Perboy, Merzer (1802-1840)

Ganet en eskopti Kahors d'ar 6 a viz genver 1802, Gabriel a oue fur ha sentuz a-vianik: devotoc'h e oue c'hoaz, goude he Bask kenta.

Lakeat e oue er skolach: ken devot, ker karantezuz e oa ma oue leshanvet gant an oll ar **mabik Jesus**. Meur a vech e veze distranset gant ar re all divar he genteliou, met e leac'h folli ha gourdrouz, ne rea nemet mouz-c'hoarzin, ha staga d'he labour a nevez. Pa zeue miz gouere, ar **mabik Jesus** en deze ar muia hag ar c'haera priziou.

Mont a reaz d'ar gouent etouez misionerien sant Visant a Baol, beleget e oue d'an 23 a viz guengolo 1825, e Paris. Kaset e oue da genta da ober skol, ha da c'houde da ren eur skolach bras, met n'en em blijje ket, goulenn a rea mont d'ar missionou. E miz meurzh 1835, an Tad Superior a lavaras d'ezhan: « It d'ar Chin. » Senti a reaz dioc'htu, laouen bras.

Tud ar Chin o deuz atao, a vare da vare, goallgaset ar re o deuz klasket ho sklerijenna: er bloaz 1839, e savaz freuz er vro enep ar gristenien. An Tad Gabriel a revaz eur pennad dindan guz, met diskuillet e oue eun devez, gant an den en doa karget d'he hench. Soudarded a c'houlemaz digant en den-ze: « Daoust ha n'ec'h euz ket » guelet, dre ama, prezeger ar falz relijion?

» Pegement, emezhan, a vezo roet d'an neb hen diskuillo ?

» Tregont pezh arc'hant, emezho.

» Mad eo: Setu hen ama, kuzet er c'hoad. »

An Tad a oue kerkent paket, amarret he zaouarn, ha

kaset dirak ar barner. Eno e oue goulennet digantan :

« Piou out ?

» — Beleg Jesus-Christ.

» — Nac'h da feiz.

» — Biken.

» — Piou ar visionerien all? Pere eo ar re a ia da ze-
» laou ac'hanout?

Ar merzer ne respountaz ket d'ar goulenn-ze, n'en doa ket a c'hoant guerza he vreudeur. Ar barner kenta-ze en doa nebeut a c'halloud, setu ma oue kaset an Tad euz an eil barner d'egile, betek eur barner braz, kriz ha digaloun. Hen a glaskaz ober da C'habriel nac'h he feiz, hag o velet ne zeue ket a benn euz he daol, e reaz staga anezan ouz eun treust huel, a istribill ouz ar c'hoat-se dre he veudou hag he vleo. Choum a reaz peder heur a istribill, hag ar barner a c'hoarze d'ezan: « Nac'h 'ta da feiz. — Birviken! » Da c'houde, e oue kaset d'ar prizoun.

Dek devez divezatoc'h, an Tad a oue great d'ezan dont a nevez dirak ar barner, ar bourreo a roaz d'ezan daou-ugent javedad var he vizach, met ar javedadou-ze a oue roet gant eur soliou boutou ler krenv ha teo. Diou jod ha penn an Tad ne oant nemet eur gouli heuzuz, pa oue roet an daou ugentved taol, met hen ne laoskaz ket eur glemmaden.

Epad meur a zevez, ar vourrevien a reaz an oll iudazerez a c'hell dont e spered tud fallakr, ar merzer a oue brevet he izili, bazatet en eun doare didruez, staget ouz eur groaz: choum a rea atao seder.

Barnet e oue erfin d'ar maro, met souezet e oue ar baianed hag ar vourrevien, p'her gueljont o vont varzu tachen ar verzerenti: he c'houliou a oa oll pareet, he benn kaer ha skeduz, he izili iac'h.

Ene ar merzer a nijaz euz ar groaz d'ar baradoz, d'an 11 a viz guengolo 1840; eur groaz sklerijen a baraz ker-kent azioe'h tachen ar verzerenti: guelet e oue gant kalz a dud.

Ar Pab Leon XIII en deuz diskleriet, er bloaz 1889, e oa an Tad Perboyr etouez an Dud Eüruz: eur breur ha diou c'hoar d'an Tad a oa c'hoaz beo.

SONJOMP ERVAD :

Ar merzer-man a c'houzanvaz gant levez, hag heb en em glem, ar poaniou brasa; pegen eüruz eo brema er baradoz! N'oump ket galvet oll da veza merzerien, met oll on deuz eur boan benag da c'houzanv, eur groaz benag da zougen bendeuz: gouzanvomp hep klem, hag on dezo eun tanva euz eürusdet ar verzerien.

AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Gui, Kloc'her

Ar zant-man, leshanvet paour Anderlek, abalamour m'oa ganet er gearik-se, a vevaz dister aoualc'h en he iaouankiz: he dud n'o doa ket a beadra. Savet mad e oue ganto evelkent, karet a rea he baourentez, pa 'z eo guir mab Doue he-unan en deuz bevet paour.

Brasa vertuz Gui, krouadur, a oa he garantez e kenver ar re a oa paouroc'h evitan: klask a rea ober vad d'ezo en eun doare benag; ouspenn-ze, e leac'h mont da c'hoari evel ar vugale all, ec'h en em blije en iliz o pedi.

Eur vech ma oa eat en iliz Laeken, eur bourk tost da Vruxell, beleg an iliz-se, souezet o velet peger c'houek e pede, a reaz eur pennad kaozeal gantan. Ar paotr a respountaz ker fur ha ken devot, ma oue goulennet dioc'htu evit kemeret soursi euz an iliz. Hen a asantaz laouen. Ar c'hloc'her nevez a oue skouer ar gloc'herien: mad e oa da skuba leur an iliz, da ziboultrenna ar skinier hag an traou all; renka ha guiska a rea an aoteriou hag imachou ar zent; soun a rea ar c'hleier d'an heur merket.

Ma oa mad dreist da zele'her kempen ti an Aotrou

Doùe, e oa guelloc'h c'hoaz da gempen he ene: kastiza a rea he gorf dre ar iun hag ar binijen; beilla a rea var he oll gomzou; tostât a rea aliez ouz ar zakramanchou; tremen a rea avechou an noz o pedi en iliz. Gant an draze, Gui a oa choumet mad evit ar paour: sikour a rea an dud ezomek. An diaoul, drouk ennan o velet ar c'hloc'her oc'h ober kement a vad, a reaz d'eur marc'hadour euz a Vruzell mont daou-hanter gantan; ar marc'hadour a lavare: « Eum den ker santel ha Gui a denno bennoz an Ao- » trou Doue varnomp, hag o veza m'en deuz urz, e sikou- » ro kalz ac'hanoun. » Gui a zonje: « Gounit a rin muioc'h, setu e c'hellin ober kaeroc'h aluzennou. »

Doùe a verkaz buan, e tle an den ober bolontez he Grouer, ha n'eo ket he volontez he-uman eo, rak lestr marc'hadourez ar zant a oue kollet pa oa a vel d'ar pors.

Gui a ententaz kerkent n'en doa ket great mad, hag evit rapari he vank, ez eaz da bardouna da Roum ha d'an Douar Zantel: chom a reaz seiz vloaz da zispenn roudou Hor Zalver, o pedi en oll ilizou euz ar Judee.

Distrei a reaz da Roum, ha pa oue er gear-man, e kavaz eur beleg santel euz a Anderlek hag a iea da bardouna, hen ive, da Jerusalem; setu ma iea Gui gantan, evit he hench. Nevezi a reaz eno he zevosion, o pokat gant respet d'an douar-ze en deuz evet guehall c'hoezen Hor Zalver benniget, a zo bet ruziet gant he c'hoad; met pa oa varnez pignat er vag evit distrei d'ar gear, beleg Anderlek a oue taget gant eur c'hlenved speguz.

Gui a joumaz da entent outan betek he varo, hag a reaz sebelia anezan gant respet hag honor.

Da c'houde e tistroaz d'ar gear, met ne joumaz mui pell beo; mervel a eure d'an 12 a viz guengolo, er bloaz 1012.

SONJOMP ERVAD :

I. — Nag a rebechou kalet a raio ar paour man, da zeiz ar varn, d'an dud pinvidik a zo didruez ouz ho nesa. Ar madou a dlefe hor zikour da brena an env, dre an aluzen.

II. — Mar doc'h paour, grit evel ar zant-man, ne glemme ket gant he baourentez. Doue a fell d'ezan e vefe var an douar tud paour ha tud pinvidik, rak en doare-ze, an eil en deuz

ezom euz egile; an unani hag ar garantez a ren etouez an dud. Ar re binvidik a dle rei euz ho arc'hant, ar re baour a ro ho labour hag ho foan; en doare-ze, var bouez en em glevet, e c'hounezer ar baradoz.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Maorill, Eskop

Ganet en Itali, ar zant-man a oue a vianik skoliet mad gant he dud. O veza kollet abred he dad, e lavaraz kenavo d'he vam, ha d'he vro, evit mont da veva dindan gouarn sant Martin, eskop Tours: eno e oue beleget.

Sant Martin he gasaz neuze da brezeg ar feiz var dro Anjers, rak ar vro-ze a oa c'hoaz kalz paianed enni. Ar zant a joumaz daouzek vloaz, e kichen kear, goude beza savet eun iliz evit sikour ar c'harteriz da veva e guir gristenien. He genteliou a zougaz kalz a frouez, rak, o veza ma rene eur vuez pinijennuz, Doue a roaz d'ezhan ar galloud da ober eur maread miraklou.

Pa varvaz eskop Anjers, Maorill a oue choazet evit ren an eskopti kaer-ze; sakret e oue gant sant Martin, eskop Tours. An eskop nevez a boaniaz, gant muioc'h a dan c'hoaz eget araok, da sklerijenna an dud a oa en he garg; an historiou koz a lavar d'eomp e tremenaz an nosvez kenta penn-da-benn en he iliz, evit goulenn bennoz an Aotrou Doue var he labour var dro an eneou.

Ren a reaz buez eur guir abostol: prezeg a rea d'he bobl; ober a rea pinijennou rust ha kalet; dre zin ar groaz hebken e roe ar guelet d'ar re zall, ar bale d'an dud seizet, ar vuez d'ar re varo. Tud dizher o devoue eur mab, gant sikour pedennou ar zant. Ar c'hrouadur-ze a varvaz ez-vianik, met Maorill a rentaz d'ezhan ar vuez. Ar bugel a oue desket mad, hag a deuaz da veza eskop Anjers divezatoe'h.

Kaer en doa an eskop santel poania ha pedi, hiniennou euz an dud a rea skouarn vouzar hag a offanse Doue, setu ma tec'haz enn devez euz he eskopti dre guz : mont a reaz da Vro-Zaoz, hag eno e oue kemeret da jardiner en eur maner.

Tud Anjers goulskoude, kollet ganto ho eskop, a gavas diouer d'ezan ; kas a rejont pevar den d'he glask er Frans oll, ha tro var dro. Ar pevar-ze a redaz euz an eil vro d'eben, epad pell amzer, hag a gavaz erfin ar zant, guisket paour, met kempen, o kas legumach d'he vestr. Tud Anjers a dridaz ho c'baloun pa veljont an hini a glaskent keit all a amzer a oa ; he bedi hag he aspedi a rejont da zistrei ganto da Anjers. Ar zant a asantaz.

Eur vech ma oue distro d'he eskopti, sant Maorill a greskaz c'hoaz he binijennou: ne gouske nemet var ar c'haled, beva a rea, hed ar C'houraiz, divar bara ha dour, ha c'hoaz ne rea nemet eur pred bep tri devez. Prezeg a rea d'he bobl heb ehan, poeza a rea dalc'hmad var an dever striz o deuz an tadou hag ar mammou da zavel ho bugale e kristenien. Etouez ar miraklou all a reaz ar zant braz-man, ez euz unan hag a zo bet great divar benn al labour da zul. Eun den a droc'he keuneut gant ar zarp en devez-se, hag a joumaz stag he zourn ouz troad he zarp epad pemp miz: ne c'helle ket diskregi. Koves a reaz gant glac'har he bec'hed d'ar zant ha kerKent e oue pareet.

Ar zant braz-man a varvaz erfin, leun a veritou, d'an drizek a viz guengolo euz ar bloaz 427, d'he zek vloaz ha pevar ugent.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar zant-man a boeze kalz var an dever striz o deuz an tadou hag ar mammou da zavel ho bugale e kristenien. Nag a bet a zo lezireg hirio; ne zeskont ket ho Fater abred aoualc'h d'ho bugale, ne boaniont ket d'ober d'ezo gouzout ho c'hatekiz. Kalz a vugale a joum c'hoaz betek an oad a nao, dek vloaz pe ouspen, heb mont da goves, dre leziregez ha dre faot ho zadou hag ho mammou. Divar vremen, ez euz eun dever strisoc'h c'hoaz da gas ar vugale da goves a vianik,


pa 'z eo guir eo gourc'hemennet ober d'ezo konnaia kerKent ho m'bo deuz skiant, kalz abretoc'h eget na reat guechall. Red eo senti ouz Hon Tad Santel ar Pab, karget gant Doue d'hor ren.

II. — Meur a hini euz ar gerent a zo re zizoursi e kenver ho bugale, p'o deuz trizek vloaz, pemzek vloaz pe ouspenn; lavaret a reont: « Bras aoualc'h int breman, skiant o deuz, » gouzout a raint peur e vezo dleet d'ezo mont da zakra- » manti. » An tad hag ar vam o dezo kount da renta da Zoue euz ene ho faotred ha merc'hed iaouank, koulz hag euz ene ho bugale. Mar deo ar re iaouank lezirek da dostat ouz ar zakramanchou, eun dever striz eo, evit ho zud, digas da zont d'ezo e tleont mont da goves bep er mare.



AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Gouel ar Groas Savet (628)



Ar gouel-man a oue miret da genta, evit dele'her sonj euz an devez ma roaz urz an impalaerez santez Helena, da lakât Kroaz Hor Zalver en iliz kaer meurbed a reaz sevel eviti var menez Kalvar.

Eur burzud braz digouezet er bloaz 628, en deuz kresket ar respet o deuz ar gristenien evit ar Groaz santel, ha rentet ar gouel-man brasoc'h e'hoaz.

Eur roue euz ar Pers, hanvet Kosroës, o veza saillet gant he arme var gear Jerusalem, a dennaz digant ar Juzevien kement tra vad a blije d'ezan; ar Groaz Sakr he-unan na oue ket espernet. An impalaer Heraklius a e'houlennaz ar Groas Santel en dro, met Kosroës a respountaz nan. Heraklius a ziskleriaz neuze brezel da roue ar Pers, rak ne felle d'ezan, a briz ebet, e vije choumet Kroaz Hor Zalver etre daouarn ar baianed. Goude beza pedet Doue, kalounek, d'he zikour, ez eaz en hent en eur lavaret e talc'hfe mad atao d'an imach-se, ha pa vije red d'ezan mervel. Pa 'z eo guir e oa Doue a-unan gantan, e oue dizale treac'h d'he enebourien; gounit a reaz ar viktor var Gosroës.

Pa oa o sina ar peoc'h etre Herakliuz ha mab ar roue Kosroës, kenta tra a reaz an impalaer a oue goulenn ma vije rentet d'ezan ar Groaz benniget. Distrei a eure eta da Jerusalem e penn he arme, hag ar Groaz gantan. Hen he-unan a falvezaz d'ezan dougen ar Groaz var he ziskoaz evit he lakât var Menez Kalvar.

Evit kaerât ar gouel, Herakliuz a viskaz he zillad braoa, met p'en em gavaz e penn hent ar Golgota, e dor vras kear, na e'helle mui mont var araok, kaer en doa poania. Ar bobl a oa ken souezet hag hen, nemet unan: Zachari, eskop Jerusalem. En eur drei varzu an impalaer, an eskop a lavaraz d'ezan: « Roue, lakit evez ne » veac'h ket, gant ho tillad kaer, henvel aouale'h ouz » Jesus-Christ, rentet en eur stad ker paour pa gerze » he-unan var hent ar C'halvar gant ar memez Kroaz. »

An impalaer, goude beza great he zonzj, a viskaz dilad dister, en em lakeaz diare'hen; neuze e pignaz heb poan var ar menez, hag e lakeaz gant respet ar Groaz el leac'h memez ma oue savet da genta evit Hor Zalver.

Doue he-unan, en honor d'ar Groaz santel, a reaz kalz burzudou evit peurachui an devez gouel.

Lavaret a reer e savaz eun den, en devez-se, euz a varo da veo dre vertuz ar Groaz santel; ouspen, pevar

den seizet, dek den lor, pemzek den dall, eur maread tud eat an diaoul en ho c'horf, ha meur a hini all e'hoaz taget gant bep seurt klenvejou, a oue pareet.

Abaoue an devez-se, an Iliz a vir e kement leac'h gouel ar Groaz Savet, d'ar bevarzek a viz guengolo. Kristenien ar Palestin dreist-oll a ra euz ar gouel-ze eur gouel kaer meurbed.

SONJOMP ERVAD :

Ma ve roet deoc'h eul lodennik euz ar guir Groaz, gant pebez respet ez afac'h d'he reseo, ha gant pebez karantez ez afac'h d'he lakât var ho kaloun!

Eur respet braz a zougomp evit kroaz Hor Zalver, abalamour ma 'z eo bet stag outi he gorf sakr, ha m'en deuz peurachuet varnezi hor prena; met daoust ha karet a reomp ni ive ar c'hroaziou all dishenvel, da lavaret eo poaniou ar vuez? — Araok m'en deuz Jesus douget koat he Groaz, en deuz douget kroaziou all, da lavaret eo disvoasket poan, abaoue he gavel beteg ar bez: gouzanvet en deuz dreist oll er Jardin Olivéd hag e palez Pilat. Ha c'houi, douget o c'heuz ho kroaziou pemdezic? Dougomp ar c'hroaziou a zigaso Doue d'eomp en eur c'houzanv a galoun vad hon oll boaniou, ken poaniou ar c'horf, ken poaniou an ene. Ia, o va Jesus, hoc'h heuill a raimp e peb leac'h, ha pa oc'h euz douget ho kroaz, e tougimp hon hini var ho lerc'h betek Menez Kalvar.

Karomp hor c'hroaziou, pa zeuont d'hon renta henvel ouz Jesus maro var ar Groaz, ha pa 'z int merkou euz he garantez evidomp.



AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Perek, Patron Loperek

Sant Perek a oa ginidik a Vro-Zaoz, ha mab da roue ar c'harteriad douar hanvet Kambri. He dad hag he vam, ouspenn ma oant a lignez huel, a oa ive kristenien euz an dibab. Poania a rejont da zavel ho mab Perek e doujans hag e karantez an Aotrou Doue. Setu perak e klasjont abred mistri fur ha gouzicik da zeski d'ezan, gant skiantchou ar bed, al lezen gristen.

Skoliet er c'hiz-se, sant Perek a oa dija en he vugaleach hag en he iaouankiz eur skouer euz an oll vertuziou. Kement hini a anaveze pe a vele anezan, en deveze evitan respet ha karantez.

Pa varvaz he dad, sant Perek, o veza ma oa ar mab kosa, a oue kinniget d'ezan ar gurunen a roue: met n'edo ket e chal gant henoriou an douar-man, er baradoz avad e felle d'ezan kaout eur plas. E leac'h eta pignat var an tron varlerc'h he dad, e roaz ar plas-se da unan euz he vreudeur. Divar neuze, sant Perek a implijaz he oll zanvez en oberou mad. Lakât a reaz sevel tiez skol, e leac'h ma e'helje an dud iaouank deski al lezen gristen, ha kouenchou, e leac'h ma e'helje an dud meuli Doue, ha labourat evit ho zilvidigez. Ar zant en em dennaz en unan euz ar c'houenchou-man, hag abarz pell, abalamour d'he zantelez ha d'he furnez, e oue choazet gant tud ar gouent evit beza ho abad, da lavaret eo ho zuperior.

Evit kreski e'hoaz he feiz hag he garantez e kenver an Aotrou Doue, sant Perek a falvezaz gantan mont da bardouna da Roum. Abaoue m'en deuz sant Per, kenta vikel Jezuz-Krist var an douar, diazezet he dron eno, Roum a zo deut da veza kear-benn ar bed katholik. Euz

a Roum, dre c'hinou ar Pab, e teu d'ar gristenien kelen-nadurez ar guir feiz, ha komzou ar vuez eternal.

Ac'hano, evit kreski muioc'h-mui he feiz, sant Perek a icaz d'an Douar-Santel, el leac'h m'eo ganet Hor Zalver Jesus-Christ, ha m'en deuz bevet; el leac'h m'en deuz prezeget he Aviel, great kement a vurzudou; el leac'h m'en deuz skuillet he c'hoad evidomp, o vervel var ar groaz. Eno, ouspenn, en deuz Jezuz savet an oll zakramanchou, evit digeri d'eomp dor an env.

Sant Perek, ar joa en he galoun, a bokaz d'an douar santel-ze a zo bet glebiet gant c'houezen Hor Zalver benniget, ha ruziet gant he c'hoad sakr.

Echu gantan he belerinach en Douar-Santel, hor zant a zistroaz d'he vro. Met ne joumaz ket pell enni. Aon en doa mechans na vije re istinet ha re veulet gant he genvroiz, setu perak e treuzaz ar mor, hag e teuaz da jour en eskopti Kemper. Mont a reaz, egiz an ermited santel guechall, da ober he ermitach en eur c'hoat doum, etouez al loened gouez, evel ma verk d'eomp he imachou.

Sant Perek a vevaz koz braz. Mervel a reaz leun a veritou, var dro ar bloaz 600 goude donedigez Hor Zalver.

Sant Perek, hanvet e leac'h all Perreu, Pezrek, Pezdrek ha Spezed, a zo bet choazet evit patron e meur a barrez e Breiz. Miret a reer c'hoaz hirio he relegou en iliz Sant-Meen, en eskopti Roazon.

SONJOMP ERVAD :

Sant Perek, petra benag ma oa pinvidik ha mab d'eur roue, ne glaske nemet savetei he ene. Ia, setu kenta tra or beuz oll da ober var an douar-man. Evel ma lavar an Aviel, petra dalv d'an den gounit ar bed oll, mar teu, goude ar vuez-man, da goll he ene!...

Hag ober a reomp-ni eun dra benag evit hor zilvidigez? Ha mont a reomp hep sul d'an oferen, ha mad ouspenn da dostât ouz ar zakramanchou? ha miret a reomp-ni al lezen gristen? Evit mont d'ar baradoz, eo red d'eomp kemeret an hent a gas di: hent gourc'hemennou Doue.



AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Syprian, Eskop ha Merzer

Syprian a oa ganet en Afrik, mab d'eur senatour euz a Garthaj; met o veza m'oa bet savet e relijion ar baianed, e renaz en he iaouankiz eur vuez diroll. He dud o doa roet d'ezan deskadurez; Syprian eur vech achu he studi gantan, a zigoraz eur skol: kalz tud a deuaz da reseo he genteliou, met daoust ma oa brudet, ne oa ket eüruz. Entent a rea ervad, gant he spered lemm, ne oa ket guirion relijion ar baianed, ha ne ouie e pe du trei. He vignoun Sesiliuz, beleg katholik, a sklerijennaz an doktor brudet etouez ar baianed, ha kerkent Syprian a droaz kein d'an idolou, hag a zerraz he skol.

Neuze e verzaz he zanvez evit sikour ar re baour, hag e c'houlennaz beza badezet.

Da c'houde, e studiaz ar Skritur Zakr evit brasa gloar Doue ha mad ar relijion gristen, ha gant he skridou niveruz ha gouizie, e c'hounnezaz d'ar feiz katholik kalz a baianed.

He zeskadurez hag he zantelez a reaz da eskop Karthaj rei d'ezan ar velegiach, daoust ma oa nevez badezet. An eskop-se o veza maro prestik goude, kristenien ar gear-man a hanvaz Syprian en he leac'h, petra benag ne oa c'hoaz nemet dek pe unnek miz abaoue ma oa gounezet d'ar feiz.

Klask a reas tec'het diouz ar garg pouner-ze, met paket e oue, ha lakeat da eskop.

D'ar mare-ze, an impalaer Des a rea brezel d'ar gristenien. An eskop nevez ne zalez ket da veza diskuillet gant paianed Karthaj, kounnaret oll en he enep abalamour m'en doa resevet ar vadiziant. Noz-deiz ne glevet e Karthaj nemet ar iouc'haden: « Syprian d'al leoned

» Syprian d'al leoned. » Ar zant, sklerijemet gant Doue, a dec'haz: n'en doa ket aon rak ar maro, emt aon en doa na vije bet touellet he zenved, ma ne vefe ket choumet ganto.

Diouz al leac'h distro en doa kavet, an eskop santel ne ehane dre he lizeri da gentelia he gristenien. Etre daou e teuaz ar maro d'an impalaer, neuze Syprian a c'hellaz distrei d'he eskopti, met ar peoc'h ne badaz ket pell.

Valerian o veza kemeret plas an impalaer Des, goude beza lezet frankiz gant ar gristenien epad eur pennadik amzer, ne zalez ket da zispenn roudou an impalaered didruez o doa diskleriet brezel d'ar relijion gatholik.

Syprian he-unan a oue galvet da vont dirak gouarner kear. — « An impalaer Valerian, eme ar barner, a fell » d'ezan e kinnigfae'h ezans d'an doueou. » — « Kristen » oun, eme Zyprian, ne anavezan ken Doue nemet Doue » ar gristenien. »

Var gement-se, Syprian a oue kaset d'an harlu.

Eur vech all c'hoaz e c'hellaz distrei da Garthaj, met evit mervel. A veac'h e oa en em gavet er gear-man, ma oue goall gaset ar gristenien adarre, ha goasoc'h eget biskoaz.

Paket e oue buan, ha kaset dirak ar varnerien. Pa c'houlennaz ar gouarner digantan hag hen a oa Syprian, e respountaz: « Ia, me eo en den-ze. » — « Neuze, eme » ar gouarner adarre, c'houi eo tad an dud dizoue-ze, pe » fell ket d'ezo senti ouz an impalaer? — Hel lavaret » oc'h euz, eme Kyprian. » — « An impalaer a fell d'e » zan e kinnigfae'h ezans da zoueou ar rouantelez. » — « Biken n'her grin, eme ar zant », ken dispount ha tra. Neuze ar gouarner a zougaz ar zetanz-man: « Syprian a » zo koundaonet da veza dibennet ». Pa glevaz ar c'homzou-ze, ar zant a zeuaz da veza laouenoc'h eget biskoaz, hag a lavaraz: « Meulet ra vezo Doue evit eur c'hras ker kaer! »

Ar gristenien bodet en dro d'ezan a ioue'haz neuze a bouez penn: « Ni a c'houlenn ive beza dibennet gant hon » eskop. » Met ne ouent ket selaouet: Syprian a oue ka-

set he-unan d'ar maro. Ar zant, pa oue prest ar bourreo da skei he daol, a dennaz euz he c'hodel pemp pez var 'n ugent aour da rei d'ezhan evit he labour. Pa ruillaz pen ar merzer d'an douar, ar gristenien a oa eno a ledas linseriou dindan he gorf, evit dastum he c'hoad (258).

SONJOMP ERVAD :

Petra a c'houezer e servich ar bed? Pe seurt digoll a c'hel-lomp-ni da c'headal digantan? Daoust hag hor c'honsoli a raio da heur hor maro? Allaz! hon dilezel a raio en hor brasa ezom. Servichomp eta eur mestr guelloc'h, servichomp Doue gwest d'hor c'honsoli pa ne joum netra ganeomp da c'headal euz ar bed-man; birviken Doue ne zeu da zilezel an dud vad a boagn d'he zervicha.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ GUENGŌLO

Gouel Pemp Gouli Sant Fransez Assis (1224)

Er bloaz 1224, Fransez a oa santel dirak Doue; mont a reaz, dre atiz ar Spered-Santel, da ober eur iun a zaou-ugent devez, en honor d'an are'heal sant Mikeal, var ar menez Alvern.

Eno, he-unan gant Doue, daoulinet peurlies a dirak he grusif, e komze ouz Hor Zalver evel ma komz eur mignoun gant he vignoun, hag e lavare da Jesus ar c'hoant braz en doa da veza bemdez henveloc'h outan. Ar zant a resevaz neuze grasou euz ar re gaera, santout a rea avechou he galoun o teuzi dre nerz he garantez; met seulvui e reseve, seulvui e c'houlenne. Eun devez ma oa devet he galoun, muioc'h c'hoaz eget araok, vardro gouel ar Groaz Sakr e miz guengolo, gant tan ar garantez, e velaz eun dra vurzuduz.

Guelet a reaz eur Seraphin, da lavaret eo, unan euz an elez huella er baradoz, elez ar garantez birvidik hag entanet; hag ar Seraphin-ze, c'houec'h askel tan d'ezan, a ziskenne euz barr an env, hag a dosteaz euz ar menez dindan furn eun den staget ouz ar groaz. Daouarn ha treid ar Seraphin a oa evel stag; diou euz he eskel a oa savet azioc'h he benn, diou askel all a zouge anezan var nij, an diou askel ziveza a c'holoe he gorf oll. Fransez a zelle, souezet; he ene a oa rannet etre al levenez hag ar glac'har. Laouen e oa o velet an eal mad; rak enn eal a ro atao konsolasion d'eun ene pur. Met guelet a rea ivel en eal-ze, imach Jesus stag ouz ar groaz, hag ar zonz-se a lakea glac'har e kaloun ar zant.

Epad ma selle, gant he zaoulagad ha gant he oll ententamant, e klevaz eur vouez o lavaret d'he ene: « Eun » eal mad ne c'hell ket kaout poan, ne c'hell ket gou- » zant; met guelet a rint unan anezo evel p'en defe » poan, evit ma teufac'h da-entent e tleit gouzant en » hoc'h ene, en eun doare mysteriuz, eul loden euz poa- » niou Jesus var ar groaz: henveloc'h e tleit beza hivizi- » ken ouz ar C'hrist en he Basion. »

Ar zant a zeuaz kerkent henvel ouz Jesus stag oc'h ar Groaz: merkou an tachou a ruziaz he dreid hag he zaouarn, hag he gostez deou a oue kleizennet, egiz pa vije bet digoret gant enn taol lans: ar goad a redaz zoken euz ar gouli, hag he zillad a oue glepiet.

Pa ziskennaz sant Fransez divar ar menez, eur groaz skeduz a oue guelet o kerzet dirazan: merka a rea e oa Fransez henveloc'h c'hoaz ouz Hor Zalver stag ouz ar groaz. Met daoust ma oa savet huel-huel var hent ar zantelez, Fransez a anavezaz e chom an den dibarfet eun draik, edoug he vuez. Rak o veza eat da glask komz ouz unan euz he Vreudeur, heman na respountaz netra, ha na zigoraz ket he zor: setu ma oue druillet eun nebeut spered ar zant. Ha Jesus a lavaraz d'ezan: « Perak e » kemerit-hu nec'h, Fransez? Ho Preur a zo en dudi, o » komz ema ganen brema, ha n'eo ket mad d'ezan dilezel » ac'hanoun, evit mont da gomz gant eun denik evel- » doc'h. » Ar zant a c'houlennaz kerkent pardoun di-

gant Hor Zalver, ha kenta guech ma velaz ar Breur-ze da c'houde, e c'hourvezaz dirazan, hag e reaz d'ezan taoler he droad varnan: « Dleet eo d'in, eme Fransez, » beza breset ganeoc'h, pa 'z eo guir em euz bet sonje- » zonou a ourgouill dirak ho tor, hag em euz klasket » miret ouzoc'h da gomz ouz Doue. »

Ar zant a zougaz epad daou vloaz, betek he varo, merkou Gouliou Hor Zalver. O veza m'en doa c'hoant, dre humilite, kuzat ar c'hras kaer-ze, e viskaz eur re voutou, hag e c'holoaz atao he zaouarn; met kaer en devoue, ar burzud a oue anavezet gant hiniennou euz an dud santella en amzer-ze. Eur c'halz tud ho guelaz, hag a bokaz d'ezo gant respet ha devosion, deiz he varo.

En iliz a zo bet savet e kear Roum, en honor da bemp Gouli sant Fransez, e virer eur vuredad euz ar goad en deuz redet euz gouli he gostez.

SONJOMP ERVAD :

Kroaz Hor Zalver a zo levr an oll, rak an oll, tud gouieziek ha tud dizesk, a lenn var ar Groaz karantez Doue evit an dud, koulz hag ar gasouni en deuz ouz ar pec'hed. Er groaz eo e kaver ar c'haera kenteliou a zantelez, rak sant Paol, abostol, a lavare: « Ne anavezan netra nemet Jesus » stag ouz ar groaz. » Sant Thomas ha sant Bonavantur o deuz diskleriet o deuz desket muioc'h o sellet ouz ar grusif eget o lenn levriou.

Sonjomp aliez e kroaz Hor Zalver, ha goulennomp digant sant Fransez entent ar c'henteliou a gavomp enni.

AN TRIVACHVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Joseph a Gupertino

(1603-1663)

Ar zant-man a oa ganet en Itali; iaouank c'hoaz e roaz da anaout e vije eun deiz eur zant braz. D'an oad a

zeiz vloaz Doue a zigasaz d'ezan eur c'hlenved louz ha poaniuz, met laouen e veze atao e kreiz he ziezaman-chou: ho c'hinnig a rea da Zoue gant skiant eun den braz.

Dre dreez outan, ar Verc'hez a zeuaz d'he renta iac'h, goude m'o doa diskleriet ar vedisined ne oa pare ebet evitan. Pa deuz en oad da labourat, e rankaz kemeret ar vither a gere evit goumit he vara, rak he dud a oa paour.

Epad ma labour, ne ehane da ober pinijen. Dougen a rea dindan he zillad eur c'houriz reun, ne zebre ket a gik, beva a rea gant eun tamik bara hebken hag eun nebent legumach. Iun a rea dalc'h-mad, hag avechou e choume tri devez heb debri tam.

D'an oad a zeitek vloaz, Joseph a c'houlenmaz beza digemeret en Urz sant Fransez. Ne oue ket resevet abalamour ne oa ket bet var ar studi. Neuze e iez da c'houlenn beza resevet e kouent ar C'hapusined; en dro-man e oue digemeret er gouent-se evel **Frer**. Er gouent zoken, Joseph a rankaz gouzanv bep seurt dismegans; goall zisprijet e oue gant lod euz ar venec'h, abalamour ma sonje re e traou an env, ha ne zonje ket aoualc'h el labouriou a veze fiziet emman. Guech e rea he labour a dreuz, guech all e torre an traou, setu ma oue great meur a a rebech d'ezan, ha kaset kuit erfin, abalamour ma oa re zibarfet.

Pebez rann-galoun evit ar zant, o velet ne oa dalc'het e kouent ebet, hag o sonjal e rea mez d'he familh.

Goulskoude he vam, goude beza bet, er penn kenta, kriz en he genver, a zeuaz da gaout truez outan pa zonjaz a zevri e stad he mab paour, hag a iez da c'houlenn d'ezan beza resevet en eur gouent euz a Urz sant Fransez. Eur breur d'he vam a rene ar gouent-se, hag an eontr a resevaz anezan, n'eo ket egiz manac'h, met evel mevel hebken, hag a roaz d'ar paour keaz Joseph guiskamant Trede Urz sant Fransez.

Al labour en devoa ar zant da ober er gouent-se a oa labour eur paotr marchosi, entent ouz eur mul ha netra ken: setu perak er gouent-se, ar zant a greskaz he bini-jennou.

Mont a eure da c'houlenn an aluzen evit ar gouent diarc'hen, eur jaden houarn gant eur c'houriz reun en dro d'he gorf. Iun a rea bemdez, ha ne gouske ket, koulz lavaret; tri blanken, eur c'hroc'hen aneval, eur penn-vele kolo, setu aze he vele.

He eontr ne zalez ket da anaout he zantelez, ha prest goude e oue resevet evel manac'h; divezatoc'h e oue beleget en despet d'an nebeut a zeskadurez en devoa. Divar neuze e reaz pinijen en eun doare mantruz; epad ar c'houraz ne rea nemet eur pred er zizun, met bemdez e lavare an oferen, ha korf Hor Zalver eo a zalc'he anezan beo.

Plijout a reaz da Zoue: a greiz ma veze o pedi, e roe d'ezan aliez ar guel euz ar baradoz; neuze e veze evel seizet he gorf, ha kaer a veze he doulla gant spillou, pe lakât an houarn ruz var he groc'hen, devi d'ezan he vizach, ne zante mui poan ebet. Aliez e veze dibradet diouz an douar, hag e save en ear evel eul labour.

Doue, evit renta he zervieher parfetoc'h c'hoaz, a laoskaz biniennou da gaout abeg emman, abalamour ma rea re a viraklou, rak ober a rea burzudou stank-stank.

Great e oue da Joseph kuitât he gouent evit mont da veva he-unan en eul leac'h distro. An dud ne 'z ejonket var he dro eno, met ar Mabik Jesus en em ziskoñezaz d'ezan meur a vech evit he gonsoli.

Mervel a eure el leac'h-se, d'an dek a viz eost 1663, d'an oad a dri-ugent vloaz ha tri miz. Klement XIII hen lakeaz e renk ar zent, er bloavez 1767.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, resevet en eur gouent, kaset kuit da c'houde, ha resevet en eur gouent all, n'en deuz biskoaz kollet kaloun: mar o deuz an dud great nec'h d'ezan, hen a zo choumet atao leun a fizians e Doue, ha Doue en deuz digollet anezan dre ar miraklou en deuz great, hag ar grasou dispar en deuz resevet. Grit evel dan; ha pa vefe trubuillet ho spe-red, ha pa vefac'h tentet gant an diaoul, lakit ho fizians e Doue. Hen ho tiouallo, Hen ho kennerzo.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Janvier hag he Goumpagnunez MERZERIEN

Ar zant-man, ganet e kear Benevant, en Itali, a oa ker santel ha ker guizek ma oue hanvet eskop: ren a reas he dud gant madelez ha furnez.

En amzer-ze, an daou impalaer Dioklesian ha Maximian a rea brezel d'ar gristenien en eun doare didruez.

Eun devez ma lenne an avieler Soziuz an Aviel d'ar bobl, an eskop santel a velaz, azioc'h he benn, eur flamm tan. Ar zant a ententaz raktal, petra ziskoueze kement-se, hag a lavaraz d'an avieler: « Soziuz, dizale e e'hou- » zantoc'h ar verzerenti. » — « Ra blijo gant Doue, eme » Soziuz, e vefe guir ar pezh livirit! A galoun vad, ia, a » galoun vad, e e'houzanvin ar maro evit difen ar feiz. » Eun nebeut devezioù divezatoc'h, an avieler a oue dis-kuillet d'ar gouarner; roet e oue urz d'he deuler er prizoun. Eun avieler all, he hano Prokul, o veza klevet ar pezh a oa e'hoarvezet gant Soziuz, a iez d'he velet gant daou vour'hiz; pa glevaz ar gouarner ar e'helou-ze, e roaz urz d'ho dere'hel ive er prizoun.

Janvier ne zaleaz ket da vont d'ho e'haout evit ho e'hennenza. Ar gouarner o veza klevet ez ea aliez da velet ar brizounerien, hag e e'houeze dre he gomzou hag he brezegennou eun niver braz a dud d'ar feiz kristen, a reaz he glask hag he deuler d'he dro er prizoun. Araok ma oue chadennet, e oue soubet en eur gaoter dour bero, met n'en devoue drouk ebet. O velet eun hevelep burzud, ar barnar a reaz dispenn he gorf gant ivinou houarn.

Daou zen a iliz o veza klevet hano euz poanion ho eskop, a iez d'he gaout, er zonj ober evitan an oll vad

a vije en ho galloud. An daou-man a oue ive dalc'het evel ar pemp all, hag ho zeiz e ouent koundaonet da veza taolet d'al loaned gouez. Pa errujont var al leac'h ma tlient beza dispennet, an eskop santel a lavaraz d'he e'houec'h koumpagnoun: « Kemerit kaloun, va Breu- » deur, gounezomp ar viktor en eur rei hor goad evit Je- » sus-Christ, d'ezan e fleomp hor buez; bezomp prest eta » da ober kement a blijo d'ezan, lakeomp hon oll fizians » ennan, ha, gant sikour he e'hras, e vezimp treac'h d'an » oll boanion. »

A veac'h m'en doa echuet ar e'homzou-ze, ma oue laosket al loaned varnezo dirak ar bobl a bez dastumet var al leac'h, met na souezusa tra! Al loened a zeuaz da e'hourvez eharz treid ar verzerien heb ober drouk ebet d'ezo.

Ar gouarner fallakr, skoet gant Doue, a zeuaz da veza dall en eun taol kount. Ar zant, goude beza great eur beden evitan, a rentaz d'ezan ar gueled. Ar burzud-se a e'houezaz tost da bemp mil paian d'ar relijion gristen, met ar gouarner a joumaz aheurtet en he falz kredennou, hag a roaz urz d'ho lakât ho zeiz d'ar maro. Ho merzerenti a e'hoarvezaz er bloaz 305.

Korf sant Janvier a zo en iliz katedral Naples. Eno ive e veler hirio eur vured leun euz he e'hoad, hag ar goad-se pouloudennet, kerkerent ha ma vez tosteate ouz penn ar Merzer santel, a zeu d'en em domma ha da vervi evel goad eun den beo: kement-se a e'hoarvez bep bloaz, dirak testou a gantehou, deiz gouel ar zant.

SONJOMP ERVAD :

Piou n'en devije ket kredet en defe goulennet beza kristen, ar gouarner paian-ze, en doa kollet he zaoulagad abalamour ma oa bet re griz e kenver sant Janvier, hag en doa rekouret ar gueled dre bedennou ar memez sant? — Dre ar burzud great en he genver, eur bobl tud a resevaz ar vadi- ziant, met hen he-unan ne fellaz ket d'ezan chench buez.

Petra oa penn-kaoz euz an dra-ze? Allaz! He galoun a oa kaledet. N'eo ket heb guir e lennomp en Aviel: « An nep » ne zelaou na Moizez nag ar bropheted, ne grede ket ken

» nebeut, ha pa zeufe memez unan euz ar re a zo eat d'ar
» bed all da zevel euz a varo da veo. »

Pegen trist eo eta stad eur pec'her aheurtet! Ha pegen
diez eo d'ezan chench buez!

Eur guir gristen ne dlefe ket koza er pec'her marvel.

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Eustach, Merzer

Eustach a oa eun ofiser braz euz arme an impalaer
Vespazian: paian e oa, met den honest evelato.

Eun devez, epad ma oa o chaseal, o redet varlerc'h
eur c'haro, e oue souezet braz o velet ar c'haro, eur groaz
var he benn, o chom'a za dirazan, hag er memez amzer
e klevaz eur vouez o lavaret: « Perak, Eustach, e redit-
» hu evelse var va lerc'h? Hoc'h oberou mad a ra plija-
» dur d'in, met me a fell d'in e trofac'h kein d'an idolou
» evit n'ez aio ket hoc'h ene da goll. »

O velet hag o klevet kement all, Eustach, spountet oll,
a lammaz raktal divar he vare'h, hag en em daolaz d'an
daoulin en eur c'houlou : « Aotrou, lavarit d'in piou
» oc'h. » — « Me, eme ar vouez, eo Jesus-Christ, an hini
» en deuz great euz a netra an env, an douar, ha kement
» tra a zo. It da Roum, da reseo ar vadiziant gant ho
» tud. »

Eustach a reaz ar pezh a oa gourc'hemennet d'ezan :
badezet e oue gant he c'hreg hag he zaou vab.

Distrei a reaz d'al leac'h m'en doa guelet ar c'haro;
eno Doue a lavaraz d'ezan: « Beteg-hen, oc'h bet pin-
» vidik, eüruz; divar vremen e rankit dastum madou
» braz en env. Poan ha trubuill o pezo, met goude ma
» viot bet diskaret, me ho savo adarre. »

Eun nebeut amzer goudeze, Eustach a gollaz he oll

zanvez. En eur stad ken truezuz, an den keaz a reaz he
zonj da guitât Roum, evit en em denna en Ejipt, met en
hent, e oue dispartiet diouz he c'hreg hag he vugale.

Lavaret a reaz, humbl, gant an den santel Job: « Va
» Doue, ho roet o poa d'in, ho lamet o peuz diganen: ho
» polontez bezet great! » Eustach a joumaz neuze er
c'henta kear a gavaz, hag en em lakeaz da vevel e ti eul
laboureur douar.

Pevarzek vloaz divezatoc'h, tud gouez o veza saillet
var douarou ar Romened, an impalaer Trajan a zeuaz
da zonj d'ezhan euz Eustach, ar brezeller dispar, hag a
reaz he glask ken a oue kavet. Hel lakât a reaz evel
araok e penn he zourdarded, evit mont da vrezekât.
Eustach a zentaz, a ieaz d'ar brezel, hag a oue treac'h
d'an enebourien. Goude ar viktorezh, e teuz da anaout
he zaou vab a oa etouez soudarded he arme. O veza sellet
piz outo, e teuz d'ho briata en eur lavaret: « Va bugale,
» setu ama ho tad, ra vezo trugarekeat Doue! »

Ar vrud a 'z eaz dre ar vro, en doa ar jeneral Eustach
kavet he zaou vab, dianket abaoe keit all a amzer; he
c'hreg beo c'hoaz, a glevas ar c'helou, hag a ziredas da
velet ha guir e oa. Eustach a anavezaz hep poan he bried,
hag en eur vriata anezi, a lavaraz kerkent d'he zaou vab:
« Setu ama ho mam! » Hag oll asamblez e skuiljont neuze
daelou a joa.

Distrei a rejont da Roum: Trajan a oa maro, met
Adrian a rene en he leac'h; ho reseo a reaz gant ar brasa
henor. An impalaer a reaz neuze kinnig eur zakrifis kaer
d'an doueou, met Eustach a ziskleriaz e oa kristen, ha
ne felle d'ezan adori nemet ar guir Doue. « Hen ebken,
» emezan, en deuz great d'in gounit ar viktorezh. »

An impalaer digaloun a roaz neuze urz d'he zevi gant
he bried hag he vugale en eur gaoter gueor goloet mad,
ha great eun tan spountuz dindanni. Evelse e c'houzanv-
jont ho fevar eur vezerenti gloriuz: ho maro a zigouezaz
var dro ar bloaz 118 goude donedigez Hor Zalver. Tri
devez goude, pa 'z ejor da zonjal tenna ludu ar verze-
rien euz ar gaoter, e oue kavet ho c'horfou en ho fez. Ho
dillad memez ne oant ket bet rostet an disterra.

SONJOMP ERVAD :

Ar c'hroaziou a zigaz Doue d'ar zent a zo spountuz avechou. Guelit ar c'hollou a reaz sant Eustach; goude koll he zavez, Doue a fell d'ezan e kolfe prest goude he c'hreg hag he vugale; met m'en deuz ho c'hollit en eun doare souezuz, e kav anezo a nevez en eun doare souezusoc'h c'hoaz. Na pebez skouer evidomp! Na dleomp ket fall-galouni, met beza prest atao da ober e peb tra bolontez Doue, ha beza leun a fizians ennan.

AN UNAN VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Vaze, Abostol, hag Aviel

Salver ar bed evit diskouez d'omp e oa deut dreist peb tra evit savetei ar bec'herien, hag evit kinnig he varadoz d'an oll, a zavas e renk an ebestel eun den ha ne zounjet ket ennan evit ar renk kaer-ze. An den-ze a oue Maze, unan euz ar publikaned, da lavaret eo, euz resevourien ar guiriou a veze savet var ar bobl, en hano ar Roumened; an dud-se o doa brud da veza tud digoustianz hag heb relijion.

Hor Zalver, en eur dremen abion he di, oc'h he velet azezet en he **vuro**, a joumaz a za, hag a lavaraz d'ezan: « Deuit d'am heul. » Biskoaz gras Doue ne oue vertuzusoc'h eget er vech-man; ar gomz-se a skoaz eun taol ker pounner var galoun Maze, ma sentaz dioc'htu; guerra a reaz kenta ma c'hellaz he oll zavez evit heuil Jesus-Christ.

Divar neuze ne guiteaz biskoaz he Vestr divin, mont a reaz gantan euz an eil kear d'eben, e kement leac'h ma tremene evit komz euz lezen Doue.

Goude m'oa pignet Hor Zalver en env, abarz ma teuaz an ebestel da guitât Jerusalem, ha d'en em zispartia

evit mont da brezeg ar feiz dre ar bed oll, an abostol-man, kuzuliet ha sklerijennet gant ar Spered Santel, a skrivaz al leor sakr hanvet an Aviel, da lavaret eo, kelou mad hag eüruz; rak an Aviel, ne deo nemet histor ar c'helou eüruz a zigasaz an elez d'ar bastored, d'an ampoent ma oue ganet Salver ar bed. Ouspenn ma ro buez Hor Zalver, an Aviel a ro c'hoaz he geennadurez, he brezegennou hag he aliou mad: ar zant-ma a rent testeni anezo.

Pa 'z eaz an ebestel dre ar bed, Maze en devoue an Ethiopii da sklerijenna; eno e c'hounezaz da feiz Jesus-Christ eur bobl tud, ken dre skouer he vuez santel, ken dre he brezegennou hag he vuzudou. Eur vere'h da roue ar vro-ze o veza maro, e rentaz d'ezi ar vuez en dro. Eur burzud ker braz a c'hounezaz d'ar feiz kristen ar roue, hag an darn vuia euz he bobl.

Eur brinsez, hanvet Iphijeni, o veza klevet eur brezegenn gaer a reaz var dalvoudegez ar guere'hded, a reaz he zonzj da joum bepred guere'hez.

Ibirtas, nevez great roue, a falvezaz gantan kaout Iphijeni da bried, met ar brinsez vertuzuz ne oa ket e poan da zimezi, hag a lavaraz d'ar roue e doa great he zonzj da joum atao guere'hez. Maze eo en doa aliet anezi da viret he guere'hded, hag ar roue fallakr a iezaz kement a zrouk ennan, abalamour da-ze, ma roaz urz da lakât an abostol d'ar maro var an heur.

Pa zeuaz ar zoudarded da glask ar zant, e kavjont anezan ouz an aoter, oc'h achui he oferen, hag e lazjont anezan a daolion bouc'hal, eun nebeut araok ar bloaz 70.

KENTELIOU TENNET EUZ A AVIEL SANT VAZE

I. — Den ne c'hell servicha daou vestr; evelse ne c'hellit ket servicha Doue hag an arc'hant.

II. — Klaskit da genta rouantelez Doue, hag e resevot an traou all var ar marc'had.

III. — Na varnit ket ho nesa, ma ne fell ket d'eoc'h beza barnet hoc'h-unan; dioc'h ma reot d'ar re all, e vezo great d'eoc'h.

IV. — Peger striz eo an hent a gas d'ar vuez eternel, ha pegen nebeut a dud her c'hav!

V. — N'euz netra kuzet er bed-man, a gement na vezo dizoloet hag anavezet.

VI. — Petra dal d'eun den gounit ar bed oll, mar teu da goll he ene?

VII. — Piou benag en em huelaio, a vezo izeleat; ha piou benag en em izelaio, a vezo hueleat.

SONJOMP ERVAD :

Jesus en eur dremen, a zellaz ouz Maze, hag her galvaz da vont d'he heul; ker buan e savaz, hag ec'h heuillaz anezan. Doue a zell ouzomp, hor gervel a ra; greomp eun implij mad euz ar c'hras a ro d'eomp; rak tremen a raio; an Doue a gomz ouzoc'h hirio, a zo marteze prest d'ho filezel. Mar klevit eta he vouez, na c'hedit ket hiroc'h. Dale eun nebeut hebken, a zo riskla ho silvidigez evit an eternite. Jesus a lavar d'eoc'h: « Deuit d'am heul, tec'hit diouz ar goall gom- » pagnuneziou, kuitait an ti-ze, restaolit ar madou-ze deut » deoc'h dre eun hent fall; it da gaout an den-ze m'o peuz » kasouni outan, ha ne fell ket d'eoc'h he velet; dilezit falz » plijadureziou ar bed. » Sentit outhan, evel sant Vaze, hag o pezo baradoz.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Thomas a Villeneuve (1488-1555)

Thomas a oa ginidik euz ar Spagn. He dad hag he vam, kristenien vad, a oa ho brasa plijadur ober aluzen d'ar beorien, hag evelse Thomas a zeskaz abred karet ar re baour. D'ar mare ma oa er skol, e roe aliez he bred he-unan d'ar vugale ezomek, ha pa vele unan benag anezo guisket fall, e roe d'ezan lod euz he zillad; dont a rea

avechou d'ar gear var gorf he roched, diare'hen ha diskabel; roet en deze he zillad d'ar paour.

O velet he spered lemm, he dud her c'hasaz var ar studi da Alkala; goudeze, e oue hanvet da vestr skol, ha kaset da zeski ar filosofi hag an theoloji d'an dud iaouank, e skolach sant Ildefons. Ne oa ket bet pell er skolach-man, ma reaz he zonz da vont da vanac'h; resevet e oue en Urz sant Aogustin e Salamank. Eno e oue beleget ha karget da zeski an theoloji d'ar re all, evel m'en doa great dija. Goude beza bet eur pennad er garg-se, e oue hanvet da abad e Salamank ha divezatoe'h provinsial en Andalouzi hag er C'hastill.

Epad ma rene he venec'h, ar prezegennou a rea er c'heariou tro var dro a reaz d'an impalaer Charles-Quint he anaout ha goulen digantan beza arc'heskop e Grenad, met ar zant ne fellaz ket d'ezan kemeret ar garg-se. Goulskoude, dek vloaz goudeze, Thomas a rankaz asanti beza arc'heskop e Valens, var urz he zuperiored, ha var goulen Charles.

Eur vech eskop, ar zant a gendalc'haz da ren ar reolen a vuez a rene er gouent; heuill a rea lezen ar baourentez hag ar guir binijen. Iun a rea divar bara ha dour, ha ne zouge nemet dillad dister, dele'her a eure d'he viskamant a vanac'h, hag e kouske var eun nebeut deliou seac'h, gant eur mean evel pennvele.

He garantez evit an dud paour a oa heb he far; kement guennek a joume gantan goude m'en deze great he zispignou, a veze roet d'ar beorien. Bemdez e roe an aluzen da bemp kant paour, hag aliez ec'h argoulaoue ar mere'hed iaouank n'o doa ket a beadra. Met karet a rea dreist oll sikour ar vugale a veze dilezet gant ho zud, hag evit diskouez he anaoudegez d'an dud vad a zastume ar vugaligou geiz-se hag a vage anezo, e roe d'ezo arc'hant. He garantez evit an dud izomek a oa ker braz, ma rea avechou burzudou en ho c'henver.

Eun devez, epad ma selle rei aluzen d'ar re baour, e velaz etouez ar vanden, eur paourkeaz den en eur stad ankeniuz meurbed, seizet he oll izili outan. Ar paour-ze a zelle truezuz ouz ar zant. An arc'heskop, oc'h he velet,

a c'houennaz digantan : « Daoust ha n'o peuz ket aoualc'h, euz oc'h aluzen? » — « Eo, evidoun-me, eme ar » paourkeaz, ez euz aoualc'h, met sonjit, aotrou, n'e- » maoun ket va-unan, bez' em euz eur c'hreg ha daou grouadur — Ha n'o peus micher ebet? eme ar zant. — « Eo, a respountaz ar paour, kere oun, met seizet eo va » oll izili ha ne c'hellan mui labourat. »

Kaloun an arc'hescop a denereaz hag e c'houennaz neuze digant an den-ze : « Pehini eo ar guella ganeoc'h, » pe beza pare, pe kaout eun aluzen vrasoc'h? » — « Ah! » eme ar paour kerkent, mar gelfen kaout ar pare! » Neuze ar zant, en eur ober sin ar groaz varnan, a lavaraz : « En hano Jesus a Nazareth a zo maro var ar groaz, » kerzit ha laoskit aze ho flac'hou, pare oc'h, n'o peuz » nemet distrei d'ho labour. » Ar paour keaz a gerzaz dioc'htu d'ar gear; pare neat e oa.

Doùe a roaz d'ar zant epad he vuez, meur a vech, ar guel euz ar baradoz hag a ziskleriaz d'ezan an devez matie mervel. He varo eüruz a erruaz d'an 8 a viz guengolo er bloaz 1555; seiz vloaz ha tri-ugent e oa.

Araok mervel e reaz rei he oll vadou d'ar paour.

SONJOMP ERVAD :

Tad ar zant-man hag he vam a oa tud vad evit ar paour; ne glaskent ket dastum madou; beva a reant hervez ho stad, ha rei a reant kement a c'hellent espern d'ar beorien. Doue ho bennigaz o rei d'ezo eur mab hag a oue eun eskop hag eur zant braz. Ha c'houi a fell d'eoc'h kaout danvez da rei gant ho pugale? Ha c'houi a fell d'eoc'h ho renta eüruz? Bezit mad evit ar beorien, grit aluzen; an aluzen a ra eüruzted an tiegeziou, e leac'h ar grisder a galoun e kenver ar re baour, a ziskar an tiegeziou guella.



AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Lin, Pab, ha Merzer

Lin, ganet en Toskaan, a oue gounezet d'ar relijion gristen e Roum, d'an amzer ma prezege sant Per an Aviel er gear-ze. Eur vech badezet, e kuiteaz ti he dad, hag e tilezaz he vadou evit heuill guelloc'h a-ze kente-liou Hor Zalver. Sant Per, oc'h anaout he zeskadurez hag he furnez, a reaz d'ezan prezeg, ha rei ho zakramanchou d'ar gristenien.

Kaset e oue, da c'houde, da brezeg ar feiz e bro Frans; kear Besanson e deuz bet anezan evit he c'henta eskop. Dre aked ar zant, niver ar gristenien a greskaz buan e Besanson ha tro var dro. An drouk-spered kounnar ennan, a glaskaz freuza labour an eskop santel, ha lakât tud kear da adori an idolou, evel araok, met koll a reaz he amzer.

Eun devez ar zant a zizaliaz tud kear da vont da gemeret perz en eur gouel braz en honor d'an doueou, hag er memez amzer e tiskleriaz d'ezo an Aviel. He brezegen a zougaz kalz a frouez; eur maread euz ar re a oa oc'h he zelaou a droaz kein d'an idolou. Eur burzud a deuaz da rei muioc'h a nerz c'hoaz d'he brezegen: epad ma komze, unan euz pilierou templ an doue faoz a gouezaz, hag a flastraz imach ar falz doue. Goulskoude al loden vrasa euz ar bobl, e leac'h beza souezet dirak eur burzud ker braz, ha trei kein d'an idolou, a oue kounnarret oll, hag an dud difeiz-se a zaillaz neuze var ar zant, hag a reaz d'ezan tec'het euz kear.

Lin a zistroaz da Roum el leac'h ma sikouraz an abostol sant Per en he labour, ha goude maro an abostol e oue choazet evit dele'her he blas. Er garg-se e oue aketuz da zoursial ouz eneou ar gristenien a oa fiziet ennan. Evit gouarn guelloc'h an Iliz, e reaz, a leverer, er me-

mez bloavez pemzek eskop, ha trivac'h beleg nevez. Dougen a reaz ive kalz lezennou, evel al lezen a zifen ouz ar merc'hed mont en ilizou diskabel. E kenver ar poent-se ne rea nemet heuill ar gourc'hemen roet dija en he raok gant an abostol sant Paol, evel m'hel lennomp er Skritur Zakr.

Feiz ar Pap-man hag he zantelez a oa ker kaer, ma roaz Doue d'he zervicher eur galloud braz var an droukspered: dalc'h mad e veze gaelet o kas kuit an diaoul diouz korf eur pec'her benag.

Goude beza renet an Iliz epad dek pe unnek vloaz, ez eaz da reseo en env ar gurunen gaer dleet d'he zantelez, dre eur verzerenti eüruz, var dro ar bloaz 79. Sant Lin a zo unan euz ar verzerien genta henoret gant an Iliz varlerc'h an ebestel, he varo santel a oue eur skouer evit ar gristenien, rak eun niver braz anezho a skuillaz evel dan ho goad evit anzao ar feiz.

Korf sant Lin a oue lakeat en douar e kichen hini prins an ebestel: ho bezion a zo e **kovesion** sant Per, da lavaret eo, dindan aoter vraz iliz veur sant Per er Vatikán, e Roum. An Tad Santel ar Pab hebken, pe avechou, unan euz he berz, a lavar an oferen ouz an aoter-ze.

Gaelet a reer he inach e meur a iliz; diskouezet e vez guech he-unan, guech o renta ar vuez d'eun den maro, guech c'hoaz o kas an diaoul kuit euz a gorf eun den klanv.

SONJOMP ERVAD :

Sant Lin, ganet paian, en deuz selaouet mouez sant Per hag a zo deut da veza eur c'hristen mad hag eur zant braz evel he vestr.

Pec'her paour, n'euz forz piou e vefac'h, n'euz fors peger griet eo ho kaloun gant ar siou fall, n'euz fors peger kaledet oc'h en ho koall dechou, ne gollit ket kourach: chench a c'hellit, chench a reoc'h mar kirit. Aoualc'h eo d'eoc'h kaout bolontez vad ha poania. Livirit eta: « Divar vremen e chench » chan buez », na livirit ket: « Me a garfe aoualc'h chench; » c'hoant em befe da jench; divezatoc'h, m'em euz sonj da » jench; » livirit: « Divar vremen e chench: chenchet oun, » gant sikour gras Doue. »

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Gouel an Itroun Varia

leun a druez evit ar sklavourien kristen

Perak e deuz an Iliz savet eur gouel en honor d'ar Vere'hez dindan an hano-ze ?

Seiz kant vloaz benag a zo, guella ha brasa loden ar Spagn a oa dindan galloud an Turked; brezel a veze heb ehan etre ar re-man hag ar gristenien. Ar zoudarded kristen paket en emgannou ha prizoumied, a oa truezuz bras ho doare. Ken truezuz all e oa stad ar gristenien a veze laeret, divar aochou ar Frans hag ar Spagn, gant an Turked divadez a deue var ho listri skanv hag armet mad euz Aljer, a drenze ar Mediterranee, hag a rea freuz ha skrab er C'hresdeiz euz hor bro.

Ar gristenien-ze, nemet nac'h a rajent ho feiz en eur vresa ar groaz, a vezo guall gaset evel sklavourien.

Pedennou birvidik a zave varzu an env, evit goulenn digant Doue hag ar Vere'hez eur zikour benag evit ar sklavourien-ze, hag ar Vere'hez benniget e devoue truez. Lakât a reaz e kaloun daou zen santel eur c'hoant braz da zavetei ar brizoumierien: an daou zen-ze a oue sant Per Nolask (31 a viz genver), ha sant Remon Pennafort (14 c'huevrer). Sikouret e ouent gant Jakes I, a oa neuze roue Aragon.

Doue, pa 'z eo guir eo an Oll-C'haloudeg, a c'hell ober peb tra heb sikour an dud, met c'hoant en deuz e teufe an dud d'en em zikour, d'en em zavetei an eil egile. Evit savetei an dud, pa oant sklavourien Satan, Doue a reaz d'he Vab kemeret natur an den, ha mervel evit an oll; evit savetei sklavourien an Turked, e choazaz daou gristen mad, a veve neuze er Spagn.

Sant Per Nolask, da c'houel sant Per en Ereou, er bloaz 1218, o pedi e kreiz an noz, a velaz ar Verc'hez benniget, hag en dro d'ezi kalz sent hag elez. « Va mab, » emezi, mam Doue oun ; va Mab Jêsus en deuz skuillet » he oll c'hoad evit an dud, hag e klaskan tud goest da » rei ho buez evit savetei ho breudeur. Goulen a rit, va » mab, sikour evit ar re a zo chadennet gant an Turked, » kinniget em euz ho pedennou d'am Mab Jêsus, hag » hen eo en deuz kemennet d'in dont d'ho kaout evit ma » savfac'h eun Urz nevez da zavetei ar gristenien a zo » sklavourien gant an Turked. » — « Kredi a ran, eme » Ber Nolask, oc'h guir Vam Doue, met piou oun-me, » evit ober eul labour ken diez? »

— « Bezit heb aon, eme ar Verc'hez, me ho sikouro: » guiska a reoc'h e guen va bugale euz an Urz nevez, ha » dizale e veloc'h emañ a du ganeoc'h; » hag ar Verc'hez skeduz a zistroaz d'an env.

Per Nolask a joumaz da bedi betek goulou deiz; neuze ez eaz buan da gaout he govesour, Remon Pennafort. Heman a ziskleriaz d'ezan en doa gulet, hen ive, ar Verc'hez santel, koulz hag ar roue Jakez kenta.

An tri zen a stagaz buan d'al labour; d'an dek euz ar miz, Per Nolask a viskask sae an Urz nevez, hag a reaz ar veu da veva atao paour, chast ha sentuz; ober a reaz ouspenn-ze ar veu da joum e kred etouez an Turked, mar bije red, evit savetei ar sklavourien kristen. Kalz tud a c'houlenmaz beza resevet en Urz nevez, hag en em asten a reaz buhan, pa velaz an dud pegement a vad a rea ar venec'h.

Daouzek vloaz da c'houde, Gregor IX a ziskleriaz e oa mad an Urz, hag a roaz kalz grasou hag induljansou d'ar venec'h. Ar Pab Paol V a zavaz ar gouel a reomp hirio, hag ar Pab Innosant XII en deuz gourc'hemennet ma vefe miret gant ar gristenien dre ar bed oll.

Ar Verc'hez Gloriuz Vari, euz bar an Env, a ziouallaz atao menec'h he Urz; meur a hini anezo a zo henoret gant an Iliz, e renk ar zent.

SONJOMP ERVAD :

Na pegen tano eo skouarn ar Verc'hez! Nag eüruz eo da zikour ar re euz ~~ho~~ bugale a zo er boan!

Ar gristenien baour, paket e sklavach gant an Turked, en despet da bep guir, a oa kalet ho buez, ha setu ar Verc'hez Vari he-unan a ra da hiniennou euz he zervicherien mont d'ho zikour. Lakeomp hor fizians er Verc'hez, e pep mare euz hor buez, en anken, er boan; hi eo hon difenno ar guella.

AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Sezny, Eskop, Patroun Guisseny

Sezny, ganet en Irland er bloaz 402, a oue savet mad gant he dud, ha kaset abred d'ar skol: eno e teskaz anaout an Aotrou Doue guelloc'h e'hoaz eget traou ar bed.

Eur vech savet da baotr iaouank, Sezny a ieaz en eun enezen da veva he-unan gant Doue, met ne joumaz ket pell eno. Done a lakeaz en he spered mont da Roum, hag an den iaouank a zentaz ouz ar vouez-se, d'an oad a 23 bloaz.

Ma oa santel araok, Sezny a oue santelloc'h e'hoaz e Roum: eno e pedaz a vir galoun, hag e studiaz guelloc'h ar Skritur Zantel. O veza ma kavaz eno sant Patrik, eskop dija, Sezny a heuliaz an den santel.

P'en devoue Sant Patrik peur achuet he studi e Roum, e tistoas varzu an Irland evit sklerijenna ar baianed a ioa e'hoaz enni, met araok diblas, e reas d'ar Pab rei an Urz a eskop da Sezny, evit kaout muioc'h a zikour digantan da brezeg ar feiz en ho bro.

En Irland, an daou vignoun a zispartiaz abalamour da gelen muioc'h a dud: Sezny a oue benniget he labour gant Doue, badezi a reaz kalz paianed.

Ar zant a boaniaz da ren he dud, ha da viret an oll vertuziou kristen: kouskât a rea atao var ar c'haled, ne evaz biskoaz an disterra banne guin, ne baoueze da bedi.

Abalamour d'ar vuez pinijennuz a rene, Doue a roaz d'ezan ar galloud d'ober miraklou braz. Chench a reaz an dour e guin, miret a reaz dre vuzud ouz diou arme d'en em ganna, lakât a reaz ar peoc'h etrezo, hag ober a reaz kalz traou ker burzuduz all.

Unan glany a lavaraz d'ezan eun devez e defe debret mouar gant plijadur: ar zant a bedaz, hag en devoe mouar daoust ma n'oa ket ar mare, ha kerkent ha m'e devoe ar glanvourez tanvet ar mouar-ze, ec'h en em gavaz pare.

Goude beza great kalz vad er vro, sant Sezny a glevaz mouez an Aotrou Doue o lavaret d'ezan treuzi ar mor ha mont da vro Leon. Senti a reaz dioc'htu; kemeret a rez gantan dek ha tri-ugent manac'h, hag e touaraz e parrez Kerlouan, er bloaz 477.

Guelet a reer c'hoaz, en aod braz, eur rum reier hag a vez great anezo Kerrek **Sant Sezny**: kaout a reer ive, demdost d'ar bourk, **Roc'h Sant Sezny**.

Ar re goz a gount, en ho marvailhou, e oa sant Brevaler gant sant Sezny pa zouaraz ar vag. Tenna a rejont ho daou ar blouzen verr da c'houzout piou a jounfe e Kerlouan: ar blouzen a zigouezaz gant sant Brevaler.

Sezny a lavaraz neuze: « Pa 'z eo guir c'houi a zo » galvet gant Doue da brezeg an Aviel ama, me a 'z aio » larkoc'h; » hag e taolaz he vorzol en ear. Ar morzol a nijaz eun hanter-leo ac'hano, hag a gouezaz e kreiz eur parkat lin e bleun: a benn antronoz, al lin a oa dare; tennet e oue, ha kerkent, Sezny hag he ziskibien a ziazezaz eno an iliz.

Setu ar pez e leverer, ne respountan ket e ve guir, penn da benn da viana. Goude beza bet o choum, eur pennad demdost d'an aod, ha savet eno eun nebeut lochemnou hanvet Peniti sant Sezny, ar zant a deuaz dounoc'hik en douar, hag a zavas eno eur gouent all, a zo deut da veza bourk Guisseney. Eno e vevaz pell, o rei d'he dud skouer an oll vertuziou kristen: mervel a reaz koz-braz, hag enterret e oue en iliz ar gouent, el leac'h m'ema brema an iliz parrez.

Abalamour d'ar burzudou braz a veze great var bez

ar zant, tud an Irland a drenzaz ar mor, a laeraz ar c'horf hag her c'hasaz ganto. Tud Guisseney, glac'haret oll, a c'hellaz evelato kout eun askorn euz breac'h ar zant: douget e vez gant respet, bep bloaz, da brosession ar pardon. Gouel ar zant a vez great er barrez, d'an 19 a viz guengolo.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en doa lavaret kenavezo ar baradoz d'he dud ha d'he vro, n'en doa sonj ebet distrei var he giz. Eat eo goulskoude en dro, eun nebeut bloaveziou da c'houde, gant ar garg hag ar galloud a eskop, evit savetei eneo ar baianed a joume c'hoaz en Irland. Ober a reaz bolontez an Aotrou Doue. An den a zo berr he spered, ne oar ket meur a dro petra fell da Zoue.

Petra zo d'ober eta, pa vezer nec'het? Goulen sklerijen digant ar Spered Santel, ha beza er zonz ober ar pez a blijo guella d'ezan. Neuze evel sant Sezny, e kavimp hent ar baradoz, hag e resevimp eno hor c'hurunen.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Syprian ha santez Justina, Merzerien

Justina, merc'h unan euz beleien an doueo faoz en Antioch, a oue kelennet gant eun avieler santel, hag a skerijennaz d'he zro he zad hag he mam. Badezet e oue asamblez ganto, pa oa e bar he iaouankiz, ha kerkent e voestlaz he guerc'hdet da Zoue. Eun alvokad paian he goulennaz da bried, met hi a respountaz: « Me a zo da Jesus-Christ. »

Evit dont a benn euz ar verc'hez kristen, an den iaouank a glaskaz eur sorser paian hanvet Syprian, hag a lavaraz d'ezan: « Karet a ran Justina, ma rit d'ezi

» renta d'in karantez evit karantez, me a roio d'eoec'h
 » daou bez aour. » — Syprian a lavaraz: « Va galloud a
 » rin; » hag e poaniaz da velet Justina. Neuze e c'halvaz
 » an diaoul d'he zikour. « Evit petra o peuz va galvet? »
 » eme an diaoul. — « Ne c'helfac'h ket gounit d'in ka-
 » loun eur plac'h iaouank euz a renk ar gristenien? eme
 » Zyprian. — Eo, eme an drouk-spered, hen ober a rin. »
 » — « Diskouezet d'in neuze ho kalloud, eme Zyprian. »
 » — « Oh! eme an diaoul, n'o peuz nemet sonjal: me eo
 » em euz great da Gaïn laza he vreur Abel, ha great d'ar
 » Juzevien lakât ar C'hrist d'ar maro; evelse n'eo ket
 » diez d'in ober ar pez a c'houlenit diganen. N'o peuz
 » nemet kemeret an evach a anavezit, hag he skuill en
 » dro da di ar plac'h iaouank, me a zeuio neuze d'ho
 » sikour. »

En nosvez-se, Justina boaz da zével evit pedi a 'z
 eaz var he daoulin, santout a reaz kerkent an diaoul o
 klask gounit he c'haloun. Ober a reaz dioc'h-tu sin ar
 groaz var he zi, en eur c'houlen digant Doue kas kuit
 an drouk-spered, ha goude-ze e reaz sin ar groaz varnezi
 he-unan. « Va Doue, emezi, o pezit truez ouz ho servi-
 cherez, ha mirit ouz Satan da zont em c'haloun. » Hag
 eur vech all c'hoaz, e reaz sin ar groaz. An diaoul a
 rankaz tec'het, ha kerkent ez eaz da gaout Syprian.
 « Ac'hanta, eme Zyprian, Justina n'ema ket ganeoc'h?
 « Perak n'o peuz ket dalc'het mad d'ho ker? »

« Choumit peoc'h, eme an diaoul, sin ar groaz en deuz
 » great d'in krena ha tec'het. »

En devez varlere'h, Syprian a c'halvaz d'he zikour
 eun diaoul all, met hema na oue ket krenvoc'h eget an
 hini kenta dirak sin ar groaz. Erfin Syprian en em er-
 bedaz ouz prins an diaoulou he-unan, met heman a c'hoar-
 vezaz gantan kement all, hag a rankaz tec'het ive d'he
 dro. Pa zeuaz dirak Syprian, heman a lavaraz d'ezan.
 « Guelit, an hini a zo maro var ar groaz a zo galloudu-
 soc'h evidoc'h, kerc'zit pell diouzin, c'houi tad ar gaou. »

Ar c'homzou-man a lakeaz prins an drouk-sperejou da
 vont en egar, hag e saillaz neuze var Zyprian, evit he
 vouga. Syprian a zeuaz da zonz d'ezan euz Justina, hag

a c'houennaz sikour, en eur ober sin ar groaz; kerkent
 prins an denvalijen a dec'haz kuit en eur iudal.

Ar sorser braz a ieaz heb dalc'hen em strinka d'an
 daoulin eharz treid an eskop, o c'houlen beza kristen,
 pa 'z eo guir sin ar groaz a oa vreae'h d'an diaoulou.

Goude beza bet sklerijennet var guirioneziou ar reli-
 jion, Syprian a oue badezet, ha prest goude, great avie-
 ler. Divezatoc'h e oue beleget, hag a benn c'houezek
 vloaz tremenet e renk ar veleien, e oue hanvet da eskop
 en Antioch. Neuze Syprian a reaz sevel eur gouent nevez
 a leanezed er gear-ze, hag a lakeaz Justina e penn ar
 gouent.

Pa zougaz Dioklesian eul lezen a varo eneb ar griste-
 nien, Syprian ha Justina a oue diskuillet gant ar re gen-
 ta, skourjezet ha kaset d'ar prizoun.

Eun nebeut devezioù goude, ar barner a reaz taoler
 anezo ho daou en eur gaoter leun a bek hag a goar bero,
 met chom a reant e kreiz, en eur gana meuleudi da
 Zoue, heb kaout an distera drouk. Eur mignoun d'ar
 barner, Athanasiuz he hano, a lavaraz: « Me a ielo ive e
 » kreiz an tan-ze, heb drouk ebet, gant sikour hon doue
 » braz Herkul. » Hag Athanasiuz a dosteaz euz ar gaoter:
 met araok m'en doa gelllet mont ebarz, e oue devet gant
 an tan; mervel a reaz kerkent. Ar barner, spountet, a
 reaz neuze d'ar verzerien dont er meaz diouz ar gaoter:
 kaset e ouent d'ar prizoun en dro, ha da c'houde dirak an
 impalaer Dioklesian; heman ho barnaz d'ar maro. Di-
 bennet e ouent er bloaz 304.

SONJOMP ERVAD :

Peger braz eo galloud sin ar groaz, pa vez great mad?
 Nag a c'hrasou a deu d'eomp dreizan! Kenta tra a rea ar
 verzerien, en amzer genta euz an Iliz, pa vezent digouezet
 var dachenn ar verzerenti, a oa sin ar groaz, evit merka
 sklear ho feiz d'an oll.

Hirio, ar vam gristen a raio sin ar groaz var he c'hroua-
 durik, araok rei d'ezan he iod guiniz; dre ma savo, e tesko
 d'ezan ober mad sin ar c'hristen. Great e vez gant peb den
 meur a vech bemdez er pedennou, great e vez gant ar

c'houeriad araok an taol pal kenta er park, gant ar beachour pa 'z a en hent, gant ar mortolod pa zav el lestr. Ar c'hroaziou savet gant hon tud koz a astenn ho divreac'h azioc'h an henchou evit difen ar beachour ho saludo gant devosion. An Iliz santel, evit sikour ar gristenien da veza devot da zin ar groaz, a ra d'ar beleg ober sin ar c'hristen ouspenn daou-ugent guech epad an oferen.

Hag ober a rit-hu, mad hag alies, sin kaer ar c'hristen?

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Cosm ha Sant Damian

Kosm ha Damian a oa daou vreur ginidik euz an Arabi; ho zud o devoa kalz danvez, hag eun devosion vraz. Koll a rejont abred ho zad; ho mam a reaz rei d'ezo eun deskadurez vad, rak ouspenn ar skianchou a zesk an oll dud iaouank, an daou vreur a resevaz c'hoaz kenteliou var ar vedisinerez. Evel ma oant bet savet mad, e kendale'hjont, eur vech deut en oad, da heuil penn da benn ho relijion: brud o doa da veza guizieg ha santel braz.

Pa vezent galvet da vont da velet an dud klanv, na gemerent guennek ebet evit ho labour, abalamour da-ze e ouent karet hag anavezet e berr amzer; eur garantez ker braz a reaz d'ezo beza leshanvet e gregach: « **Medisined dibae.** »

Ouspenn-ze, pa na c'hellent ket dont a benn da barea ho re glanv dre ho medisinez, e reant burzudou en ho c'henver. Evelse e parejont tud dall, ha klenvejou all en doare-ze, ha n'euz pare ebet evito hervez ar bed.

N'eo ket souez eta, ma nijaz da bell bro ar vrud e oant daou vedisin braz. Met n'eo ket medisined ar c'horf hebken oant, medisined an ene e oant ive; kalz tud a c'houmesjont d'ar feiz.

D'ar mare ma lakeat ar gristenien d'ar maro, an daou vreur a oue diskuillet d'ar gouarner, ha barnet da veza skourjezet, met da c'houde, e ouent liamet ha taolet er mor. Eun eal a dorraz ho liamou, setu ma ouent saveteat.

Pa glevaz ar gouarner hano euz ar burzud, e sonjaz raktal e oa an daou vreur sorserien, hag o veza ho galvet evit an eil guech dirazan, e lavaraz d'ezo evelhen: « C'houi a zo daou zorser braz, diskouezit d'in-me an » doare d'ober ive traou ker burzuduz. »

— « N'oump ket sorserien, a respountaz Kosm, met » kristenien oump hag en hano hon Doue e reomp ar » seurt traou-ze; gant he zikour eo oump t'reac'h d'ho » toueou. »

Goumezet gant ar burzudou-ze, ar gouarner a oa er zonzj trei gant ar relijion gristen, pa deuaz an drouk-sperejou da voaska var he c'houzoug evit he vouga. An daou zant a reaz eur beden da Zoue, ha kerkent an drouk-sperejou a dec'haz kuit. Neuze ar gouarner a zavaz keuz gantan da veza sonjet eur pennad dilezel servich an doueou, ha kounnaret oll enep ar verzerien, e lavaraz d'ezo: « Guelit, setu aze petra c'houmezer! prest e vijen bet » mouget, abalamour m'em euz sonjet trei kein da zou- » eou ar rouantelez. »

Kaer o devoue an daou vreur diskleria d'ezan eo Jesus-Christ en devoa he dennet euz a dre skilfou an drouk-sperejou, ar gouarner a reaz skouarn vouzar, hag a roaz urz da verzeria an daou vreur goasoc'h c'hoaz.

Antronoz e reaz c'houeza eun tantad tan dindan an daou verzer, met dre vuzud adarre, ar flamm e leac'h ho devi ne reaz drouk ebet d'ezo. Er memez amzer, an douar a grenaz, ha lod euz ar flammou tan a zevaz hi-niennou euz ar baianed a oa var al leac'h.

Ar gouarner, e leac'h anzaou galloud ar guir Doue a rea burzudou ker braz, a joumaz aheurtet en he bec'hed, hag a roaz urz da zibenna an daou vreur kalounek. Ho merzerenti a zigouezaz var dro ar bloaz 297, dioc'h ma kreder.

SONJOMP ERVAD :

Eun dra vad eo kemeret soursi euz an nesa pa vez klanv pe en dienez; met en eur ober vad d'he gorf, ne ankouna-

c'hait ket ober vad d'he ene. Pegen aliez a vech, e tiez a zo, eo ar c'hovesour an diveza hini a vez galvet var dro eun den klanv. An ene a dle beza da genta goulskoude, rak pa vez kollet an ene, e vez kollet peb tra. Pa vez eur riskl benag evit unan klanv, galvit atao medisin an ene, ar beleg; n'eo ket p'en devezo kollet an hini klanv he anaoudegez, eo d'eoc'h mont da glask anezan; araok eo d'eoc'h mont.

Pe seurt kovesion a raio eun den, mar deo hanter gollet he benn gantan dre nerz he dersienn, dre nerz he glenved? Ha goulskoude, divar ar govesion ziveza-ze, e vezo barnet eun den, evit an oll eternite! Ha sonjet oc'h euz mad e kement-se?



AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Santez Thereza ar Mabik Jezuz hag ar Vizach Santel
(1873-1897)



Ganet e kear Alençon, d'an 2 a viz genver 1873, Thereza a oue ar iaouanka, euz nao grouadur: daou baotr ha

seiz merc'h. Pevar a varvaz iaouank flam; ar pemp all a iez da leanezed, peder en Urz Karmez; ar bemped, en Urz ar Visitation. Famillou tud santel a zo c'hoaz, a drugare Doue, en hor bro Frans.

Thereza a oue da Zoue abred. « Abaoue an oad a dri bloaz, emezhi eun devez, n'oun biskoaz choumet teir munuten leun, heb sonjal en Aotrou Doue; divar va zri bloaz, n'em euz biskoaz lavaret nan da Jesus. » Choumet eo, hed he buez, heb ober eur pec'hed marvel.

Eur garantez tener e devoue evit he mam, eur vaouez a feiz krenv, met he mam a 'z eaz gant eal Doue pa n'e oa c'hoaz Therezaik nemed pevar bloaz hanter.

D'he nao bloaz, araok he Fask kenta, ar vere'hik a gouezaz klanv bras, hag an oll a gave d'ezho e oa dare da vervel. An tad a lakeaz neuze evithi eun naved oferen-nou en iliz Itroun Varia ar Gounidou, e Paris, hag ar c'hoarezed a bedaz a greiz kalon ar Vere'hez benniget da gaout truez ouz ho c'hoarik, fruez ouz an hini a veze great ar **rouanez vian** anezhi en ti. Parea a reaz.

Klevet e doa abred mouez an Aotrou Doue o c'hervel anezhi d'ar-gouent, met na doullaz kaoz d'he zad nemed d'he femzek vloaz, rak neuze e klevaz mouez Doue sklearoc'h. Goulen a reaz mont en Urz Karmez, rak diou euz he c'hoarezed, an diou gosa, a oa eat en Urz-se dija. An tad, goude beza great mad he zonz, a lavaraz ia, met beleg ar gouent a lavaraz nan: « Re iaouank oc'h c'hoaz emezhan. Dont a reot d'ho ploaz var 'n ugent hebken. » Ar plac'hik a skuillaz daelou c'houero.

Reşevet e oue evelato d'he c'houezek vloaz, d'an 9 a viz ebrel 1888: diou euz he c'hoarezed a oa eno, evel m'eo bet lavaret dija, hag unan anezho a zo superiozez er gouent hirio. Thereza a oue guisket d'an dek a viz gen-ver 1889; trivac'h miz divezatoc'h, d'an 8 a viz guengolo 1890, e reaz he **frofeşion**. Hanvet e oue Thereza ar Mabik Jesus hag ar Vizach Santel.

Araok ma oue guisket Thereza, he ene a oue en eur zec'hor vras, ha na saoure plijadur ebet gant he fedennou. Kaer e doa pedi, na gave teneredigez ebet o komz gant Jesus. Met en devez ma resevaz he guiskamant lea-

nez, he ene a oue beuzet en eur mor a sklerijen hag a zouder. Doue a zigolle anezi, abalamour ma oa choumet stard, en despet d'ar zec'hor-ze.

Dre ma c'hastenne he buez, al leanez santel a greske he c'harantez evit an Aotrou Doue. Na c'hoantea ket ober traou burzudus evel meur a hini euz ar zent, goulen a rea karet Doue muioc'h mui bemdez, ha beza dianavezet gant an dud. Guelet e doa, pa oa iaouank, bugale o teurel bleun roz var hent Hor Zalver, da zeiz gouel ar zakramant, hag e doa mall da vont d'ar baradoz, evit teurel eno bokedou roz dirak he Jesus muia karet.

Mervel a reaz e barr he yaouankiz: kinniget e doa abred he foaniou hag he buez da Zoue, evit silvidigez ar bec'herien.

Epad ar miz hanter diveza m'e deus bevet, al leanez santel n'e deuz gellet kommunia devez ebed. Pebez rann galon evithi! Distaol a rea kement a zebre.

Diskleria a reaz epad he c'hlenved: « Roet em euz va c'harantez da Zoue var an douar, hag er baradoz, an Aotrou Doue a ziskouezo karantez d'in. Lakât a rin bokedou roz da lavaret eo: grasou, da goueza evel ar glao var an douar.

— Na kaer eo, a lavare d'ezhi eul leanez, beza er baradoz, saouri eno an eürusdet eternel.

— N'eo ket an dra-ze eo a ra avi d'in. Ar garantez eo. Oh! karet ha beza karet! Ha distrei var an douar da entana karantez Doue! Amzer va baradoz a ielo d'ober vad var an douar. »

« Daoust ha resinet oc'h d'ar maro? a c'houlennaz diganthi ar beleg.

— Va Zad, emezhi, resinasion am euz d'ar vuez. Levenez eo am euz dirak ar maro. »

Mervel a reaz en eur zellet ouz he C'hrusifi, hag en eur lavaret: « Oh! he garet a ran! Va Doue, me... ho... kar! (30 a viz guengolo 1897).

Abaoue m'eo nijet he ene d'an env, Thereza e deuz great heb ehan vad d'ar gristenien, dre ar bed oll. Pi XI en deuz diskleriet eo Thereza ar Mabik Jesus eur mirakl a vertuziou, hag eur burzud a viraklou. Savet en deuz

anezhi e renk ar Plac'hed Eüruz d'an 29 a viz ebrel 1923, hag e renk ar zentezed henoret gant an Iliz d'ar 17 a viz mae 1925.

SONJOMP ERVAD :

Santez Thereza ar Mabik Jesus n'e deus ket great a binijennou rust ha kalet evel meur a hini euz ar zent brudet braz, n'e deuz ket great a viraklou epad ma oa beo. Great e deuz mad peb tra hed he buez, heb ober traou kaer dreist an dud all, hag en doare-ze e deut da veza santez. Pe seurt a vir ouzimp d'ober evelldhi? Doue a roio d'eo'h ar grasou en deus roet d'ezhi, mar kirit lakât ho poan evelldhi, d'he zervicha a greiz kaloun.

AN NAVED DEDVEZ VAR 'N UGENT A VIZ GUENGOLO

Sant Mikeal, Arc'heal

Pa oue krouet an elez, Doue, hervez lod euz doktored an Iliz a roaz dioc'htu tro d'ezo da ziskouez ha stard e oant en ho dever.

An doktored-se a lavar: D'ar sperejou pur en doa nevez krouet, hag a oar kaer evel an deiz o e'houlaoui, Doue a ziskouezaz an eil Fersoun euz an Drindet gant natur an den a dlie kemeret en amzer da zont. Lavaret a reas d'ar sperejou parfet-se: « Red eo d'eo'h adori an den-Doue. » Er memez mare, Doue a ziskleriaz d'an elez e tlient henori, evel ho rouanez, ar Vere'hez benniget, choazet evit lakât Mab Doue er bed.

Neuze, an eal kenta, he hano Lusifer, an hini en doa ar renk huella etouez ar sperejou kaer-ze, an hini en doa bet digant Doue ar grasou brasa, ar spered lemma, ne ententaz ket plega dirak Mab Doue en em e'hreat den: « Me, emezan en he ourgouill, me! spered ker kaer, me

» spered dispar, adori eun Doue en em e'hreat den!
» Biken! Birviken! »

Na fellas ket d'ezhan ken nebeut anaout an Itrou-Varia evit he rouanez: « Nan, nan, eme adarre Lusifer, » an dra-ze na vezo ket! »

Ker buan, sant Mikeal, arc'heal, a laoskaz eur griaden: « Quis ut Deus? Doue ar mestr: D'ezan eo ren; » d'eomp-ni eo senti; ne doump nemet he zervicherien.
» Ar pezh a e'hourc'hemen d'eomp Doue, a zo evit hor » brasa mad. »

Komzou sant Mikeal a oue klevet, dre bevar e'horn ar baradoz, setu perak ar peb brasa euz an Elez a reaz gant joa an daou dra a e'houlenne diganto an Aotrou Doue. An elez-se a adoraz gant respet Mab Doue, an eil Fersoun euz an Drindet en em e'hreat den, hag, a greiz kaloun, e saludjont an Itrou-Varia evit ho rouanez.

Siouaz! Eur marcad euz ar sperejou kaer-ze, touellet gant Lusifer, a lavaraz: « Ni ne adorimp ket Mab an » den, ha ne anavezimp ket ar Vere'hez Vari evit hor » rouanez. »

Hag e oue, eme ar Skritur Sakr, eun emgann spoun-tuz, eun emgann skrijuz en env; sant Mikeal a stourme e penn an elez mad, Lusifer a stourme e penn an elez ourgouilluz, hag an treac'h a joumaz gant ar re vad kenerzet gant Doue: an ifern a oue krouet, hag an elez fall a oue oll strinket emman raktal. Hag an ifern, leac'h a boaniou kriz, a gasouni, a vlasphem, an ifern a oue premet varno evit atao.

Doue a zigore, er memez mare, he varadoz d'an elez mad. An hini en doa renet ar stourmad, Mikeal, a oue ive er penn araok evit renta henor d'an Drindet Santel. Hen a zo breman ar e'henta euz an elez hag arc'helez, hanvet e vez gant pep kristen er C'honfiteor, dioc'htu goude ar Vere'hez Vari.

Abalamour m'en deuz diskaret Lusifer, eo bet lakeat gant Doue da zifen pobl Israel guech all. Pa varvaz Moyzez, rener braz pobl Doue, Lusifer a glaskaz laerez he gorf, sonjal a rea: « Ar Juzevien o deuz kement a » respet evit Moyzez, mac'h adorint he relegou, ha ma

» kouezint en idolatri ; » met arc'heal gallouduz an emgannou, Mikeal, a oa eno, hag a ziarbennaz an eal fall. Kuzat a reaz, var urz Doue, korf Moyzez, ha n'eo ket bet kavet betek vrema. D'ar mare ma tifenne Judas Makabee pobl Israel eneb soudarded roue ar Syrii, e oue gueleet eun devez, deiz emgann, daou zen iaouank skeduz o tisken euz an env hag o vont a bep tu d'ezan: diouall a reant Makabee euz a bep drouk. Ar Syrianed a oue trec'het, ugent mill a oue lazet.

Unan euz an daou eal, eme an doktored, o oa sant Mikeal.

Sant Mikeal, difennour pobl ar Juzevien betek amzer Hor Zalver, a zo breman difennour ar Frans. Hor bro a zo bet, epad pell amzer, ar vro gristen dreist ar re all, mad da gas sklerijen ar feiz d'ar broiou pell, mad da zifen guirion Doue e pevar c'horn ar bed.

SONJOMP ERVAD :

Ni on deuz da stourm, ni ive, var an douar, oc'h an drouk-spered, oc'h ar bed, ar c'hig; hor c'hleze a zo ar beden, met piou hor zikouro guelloc'h eget sant Mikeal? Pedomp eta anezan da gaout truez ouzomp, d'hor skoazella er stourmad evit ma vezimp treac'h hed hor buez, evit ma vezimp treac'h dreist oll da heur hor maro, pa raimp ar stourmad diveza gant Satan.

AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO

Sant Jerom, Beleg ha Doktor

(331-420)

Sant Jerom, ken anavezet dre ar bed oll, dre he vertuziou, he binijennou hag he zeskadurez vraz, a zo ganet e kear Stridon, en Dalmasi, e tro ar bloaz 331. He dad

hag he vam a oa kristenien vad hag a zilaz abred en he spered hag en he galoun, karantez ha doujans Doue. O velet e teske buan, he dud her c'hasaz da Roum da achui he studi. Er gear-man, Jerom a oue, e berr amzer, treac'h d'an oll skolaerien all. Ne oa ket c'hoaz ugent vloaz, ha dija e oa deut da veza ker gouzieg hag he vistri.

Evel ma c'hoarvez re aliez siouaz! gant an dud iaouank, an istim vraz o doa an oll evit he zeskadurez a reaz drouk da Jerom. Nebent ha nebut, e tilezaz he zeveriou a gristen evit darempred tud ar bed, tano ho feiz ha direol ho buez. Mont a reaz, da c'houde, evit kreski he zeskadurez, da veachi dre ar Frans, an Itali, ar Judee, o lemm ar skridou kaera a gave e peb leac'h.

Kaout a reaz eun dra presiusoc'h eget an deskadurez, rak kaout a reaz ar feiz kristen a nevez. Sonj a deuz d'ezan euz kenteliou mad he dad hag he vam ; mez a zavaz gantan da veza great muioc'h a stad euz an dud eget euz an Aotrou Doue, hag ec'h en em dennaz en eul leac'h distro euz ar Syri. Eno, e koumpagnunez eun nebut ermited, Jerom na glaskaz ken nemet servicha Doue ha gounit eneo d'ezan.

An diaoul a iez di d'he denti, ha setu ama ar pez en deuz skrivet sant Jerom he-unan divar-benn ar brezel iud a rea d'ezan, noz-deiz, an drouk-spered : « Ped » guech, emezan, evidoun da veza eat pell diouz an dud, » e kave d'in, beza c'hoaz e kreiz ebatou Roun, evel guech » chall em iaouankiz! Ped guech, e kave d'in, beza c'hoaz » e touez mere'hed koant, petra benag ne oa en dro d'in » nemet loaned gouez! Va c'horf paour a oa dizec'het; » va c'hroc'hen, devet gant an heol, a oa ken du hag hini » eur morian, hag, evelato, a bep seurt sonjezonou vil ha » divodest a zave em spered! Evit trec'hi an oll dentasio- » nou divalo-ze, e choumen aliez meur a zizun, heb ke- » meret ken bevans nemet bara ha dour. Evit kaout ar » c'hras d'en em zele'her atao pur ha chast, a gorf, a » spered hag a galoun, e tremenen aliez an noz o pedi hag » o skei var va stomok gant eur mean, ken a blijaz erfin » gant Doue renta d'in ar peoc'h. »

D'ar mare-ze, eun den ourgouillus, he hano Pelaj, a

glaske koll an eneoù dre bep seurt kenteliou fall. — En he garantez evit Doue hag an nesa, Jerom, beleg neuze, a gasaz liziri evit kemen d'ar gristenien ne rea Pelaj, en ho zouez, nemet labour an drouk-spered. Kounnaret-braz, Pelaj a c'houe hemennaz d'ar re en doa dija touellet, ober skrab er gouent m'oa eat ar beleg santel enni, ha lakât an tan var ho lerc'h.

O veza klevet hano euz santelez Jerom hag euz he zeskadurez vraz, ar Pab Damas her galvaz da zont d'he gaout, e Roum. Dre ma oa ar zant eur mestr var an oll skianchou sakr, ar Pab he zalc'haz en he gichen evit he zikour da ren an Iliz.

Pa varvaz ar Pab Damas, Jerom a skoaz varzu an Douar Santel hag a ieaz da jom da Vethleem, e leac'h m'eo ganet Jesus, Salver ar bed.

Divar neuze, ne zonzaz nemet studia a-zevri ar Skritur Zakr. Evit entent guelloc'h kement a zo merket el leor santel, e velaz gant evez pevar c'horn-bro ar Judee. Gant an dra-ze, evitan da veza koz dija, ec'h en em roaz da studia al langach hebreu, da lavaret eo, yez ar Iuvezien guechall. Ar yez-man a zo diez-braz da zeski, ha meur a vech, evel m'en deuz ar zant hen anzavet, e oue varnez koll kaloun; met kement a c'hoant en doa da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneoù, ma kendalc'haz, en despet d'ar boan, yar studi al langach hebreu: peb kentel a gouste aour d'ezan.

Doue a vennigaz he volonteaz vad, hag a benn eur bloavez benag, e c'houie an hebreu koulz hag al latin.

Sant Jerom a droaz, neuze, divar an hebreu hag ar gregach, ar Skritur-Sakr penn da benn e latin. Eur maread leoriou all a skrivaz c'hoaz evit dislavaret ar falz-doktored euz he amzer, hag evit miret outo da ober gaout d'an eneoù. Sikour a reaz ive eun nebeudik mer-c'hed devot da gerzet var hent ar zantelez huela.

Petra beng ma labore kement, ha ma rea pini-jennou kalet, sant Jerom a vevaz koz-braz. Nao bloaz ha pevar-ugent en doa, pa deuz an Aotrou Doue d'he gerec'hat, d'an tregont a viz guengolo euz ar bloaz 420.

KENTELIOU SANT JEROM

I. — Kaer hor bezo ober, n'euz fors e pe leac'h e vezimp, an drouk-spered a zigaso d'eomp bep seurt tentasionou fall; met, gant ma pedimp, Doue a roio d'eomp ato ar c'hras da zeic'her penn ouz an drouk-spered, ha da veza treac'h d'he oll dentasionou.

II. — Ne lezit ket eur goall-zonj da greski en ho spered, met kasit anezi, buana ma c'helloc'h, pell diouzo'h. Keit ha ma z'eo bian c'hoaz an enebour, eo eaz rei lam d'ezan.

III. — Ar iun en deuz ar vertuz da renta Doue trugarezuz ouzimp ha da gas an drouk-spered divar hon tro.

IV. — Pa bedit, e komzit ouz Doue; pa lennit eul leor mad, Doue he-unan eo a gomz ouzo'h, evit rei d'eo'h he aliou santel.

AR C'HENTA DEVEZ A VIZ HERE

Sant Remi, Arc'heskop

Ar zant-man a oa ganet er bloaz 437 e kastell Laon, a gristenien a ouen huel. He gerent a reaz kement a oa en ho galloud evit he zével hervez Doue, ha Remi a ziskouezaz a-vianik e oa dija troet var an devosion.

Labourat a rea da zeski, ha muioc'h c'hoaz da veza santel; rak-se e rea levez he dad hag he van, hag e oa meulet gant an oll abalamour d'he furnez, d'he vouiziegez ha d'he vertuziou. Ne oue guelet biskoaz er c'hoariou; met he vrasa plijadur a oa tec'het euz a douez an dud, evit pedi Doue ha sonjal en he ene.

N'en devoa nemet daou vloaz var 'n ugent pa oue lakeat da eskop e Reims, ha brudet e oa neuze dija dre he zantelez hag he vouiziegez. An eskop iaouank a boaniaz a zevri da c'hounit eneoù da Zoue. Koms a rea, en he brezegennou, enep al luxur; klask a rea dougen he bobl

da gasât ar pec'hed vil, a laka kement a dud da goueza en ifern. Bez' e oa eun tad evit ar beorien, ha' sec'ha a rea daelou an dud glac'haret.

Gounit a reaz da Zoue eun niver braz a eneou. Ar Roue Clovis, o veza great en emgann Tolbiac al le da veza kristen m'en dije an treac'h, a deuaz goude ar viktor daved sant Remi e Reims. Ar zant a zeskaz d'ezan al lezen gristen, hag hen aliaz da reseo ar vadiziant heb dale.

Ar roue a c'houlennaz digant he arme petra da ober: « Roue benniget, eme ar zoudardet, ni a dro kein evel-doe'h d'ar falz doueou, hag a fell d'eomp adori guir Doue Remi. » Neuze e oue merket eun deiz gouel evit rei ar vadiziant d'ar roue ha d'he zoudardet. Tremenn a rejont oll an noz o pedi; e kreiz m'edo an eskop santel oc'h ober d'ezo euz brezegen helavar meurbet, e paraz varnan eur sklerijen gaer euz an env: « Oh! emezan » kerkent, nag a draou burzuduz a raio ar Frans, dre » e'halloud Doue, evit ar relijion gristen! »

Antr'noz edo ar gouel: iliz veur Reims a oue kempennet enn eun doare dudiuz, sant Remi a deuaz gant eur brosesion gaer da zigemeret en iliz, ar roue, gant santez Klotild hag he bobl. Pa oue dirak an aoter vraz, Clovis a c'houlennaz digant an aotrou 'n Eskop: « Va » zad, daoust hag ama ema rouantelez an env m'oc'h » euz komzet d'in anezi? » — « Nan, eme ar zant, n'ema » ama nemet penn an hent a gas di! »

Clovis a oue kaset d'ar mean-fount ha sant Remi a lavaraz: « Sikambr, stouit ho penn dirak skeudennou » an Aotrou Doue o c'heuz devet betek vreman, ha devit » an doueou faoz oc'h euz adoret. » Hogen an abostoler, karget da zigas an oleo sakr evit ar vadiziant, n'en devoa ket gellet tostât, her stank e oa an dud en iliz. Sant Remi, o veza neuze savet he zaoulagad etrezek an env, a bedaz Doue da bourvei. Guelet e oue raktal eur goulm guen kann o tiskan en iliz, eur vuredad oleo ganti en he beg, hag oc'h he lakât etre daouarn an eskop santel. Sant Remi, goude beza trugarekeat an Aotrou Doue, a zakraz Clovis gant an oleo burzuduz-se. Ar vured deut euz an

env eo a hanver an Ampoul zantel; gant an oleo sakr anezi e bet sakret abaoue rouaned Frans. Sant Remi a vadezaz en deiz-se Clovis, he ziou e'hoar, ha tri mil zoudard.

N'eo ket souez eta en defe ar zant gounezet d'ar feiz kement a eneou, rak Doue en devoa roet d'ezan an donezoun a viraklou. Dre he bedennou e tigasaz eur plac'h iaouank euz a varo da veo.

Erfin, goude beza renet he eskopti epad ouspenn dek vloaz ha tri ugent, e rentaz e peoc'h he ene da Zoue, var dro ar bloaz 533.

SONJOMP ERVAD :

Mad a reaz sant Remi prezeg aliez enep al luxur, rak ar pec'hed milliget-se a goll kalz a eneou, hag a ra d'an dud beza henvel ouz al loened mud. Mad a reaz lakât an oll da garet ar burete, rak ar vertuz kaer-man a ra d'eomp beza henvel ouz an elez, hag a denn varnomp eun niver bras a c'hrasou pinvidig ha nerzus. Doue, evit kreski hor vertuz hag hor mirit, a lez an drouk-spered d'hon tenti, met na fell ket d'ezan e vemp tentet en tu all d'hon nerz. An diaoul a glask hon dougen d'an drouk, met ne c'hell ket ober d'eomp pec'hi en desp'et d'eomp; ma stourmomp a vir galoun, na c'hell ket hon trec'hi.

O purete, o chastete, o vertuz an elez, peger kaer oc'h-hu! pegen din oc'h da veza karet, pegement e plijit-hu da Zoue, ha peger mad oc'h-hu d'an den!

AN EIL DEVEZ A VIZ HERE

Gouel an Elez Gardian

Doue en deuz, evit pep hini ac'hanoump, eur vadelez heb he far. Oll hor beuz c'hoant beza eüruz, goude ar vuez-man, er baradoz, hag hen ive n'en deuz ken c'hoant nemet hennez. Abalamour da-ze, en deuz hor c'hrouet;

abalamour da-ze, e kinnig d'eomp, epad hor buez, he zakramanchou; abalamour da-ze, en deuz roet d'eomp an Introu-Varia da vam.

Ouspenn-ze, evel ma lavar d'eomp an Iliz, da genver an devez-man, da bep hini ac'hanomp en deuz roet eun Eal gardian. Hor Zalver Jesus-Christ, en he Aviel, a verk d'eomp sklear ar virionez-man: « Diouallit, emezan, na » vijec'h kaoz d'ar vugaligou da ober ar pec'hed, rak ho » Elez a vel atao va Zad a zo en env. » Dioc'h ma lavar eta Jesus he-unan, kerkent ha ma $\frac{1}{2}$ euz bet ac'hanomp, Doue en deuz karget unan euz he Elez da veilla varnomp, ha d'hon diouall diouz an drouk, keit ha ma vijemp var an douar-man.

Hon Eal a gemer ar brasa soursi ac'hanomp: ped guech, dreist oll pa oamp bianik, n'omp ket bet e riskl da veza glazet, da veza beuzet, da veza lazet? Bemdez, koulz lavaret, e veler bñgale konezet divar eur c'hae, pe divar eur voger huel heb drouk ebet, avechou all e veler anezo oc'h en em lakât etre treid al loaned, e riskl da veza flastret, breset ganto, ha goulskoude n'o deuz diez ebet. Aliez e vez klevet tadou ha mamou o lavaret: « Ker buan, va mabik, va merc'hik a vije bet lazet; en » devez all, ne c'houzomp ket penaoz n'int ket bet tizet », ha mill dra evel-se.

Ar pezh a zo guir euz ar re vian a zo ker guir all euz ar re vraz: dre vuzud eo e vezomp diouallet avechou, heb drouk ebet, en danjeriou brasa.

Ma kemer soursi euz buez hor c'horf, hon Eal mad a gemer mañoc'h a zoursi c'hoaz euz hon ene, a zo al loden vella ac'hanomp.

Buez an den, var an douar-man, eme ar Skritur Sakr, a zo eur brezel heb ehan. E peb mare euz an deiz hag euz an noz, e vezomp e riskl da veza tree'het gant enebourien hor zilvidigez, ha da goll hon ene paour. An abostol Sant Per hel lavar d'eomp, hag her gouzout a reomp dreizomp hon-unan; an drouk-spered a zo atao var hon tro, o klask sailla var hon ene evit rei d'ezan taol ar maro. Met, a drugare Doue, hon Eal gardian en em zalc'h ive atao en hor c'hichen, evit hor zikour da drec'hi an drouk-spered, hag he dentasionou fall.

Avechou e klevomp evel diou vouez, unan o poulza ac'hanomp da ober ar pec'hed, unan all o tizalia ac'hanomp d'hen ober: an drouk-spered eo o klask hor chacha gantan, var hent an ifern; euz he du, hon Eal mad eo, o poania evit hon dele'her var hent ar baradoz.

Evit-se, hon Eal-mad a zigas d'eomp bep seurt sonjezounou santel. Komz a ra ouzomp e goueled hor c'halon euz an Aotrou Doue hag a vel peb tra, euz an Aotrou Doue hag en detz hor buez etre he zaouarn gallouduz, hag a c'helfe hor flastra, var an taol, hag hor stlapa evit atao, e tan an ifern, m'or bije ar zempladurez da ober ar pec'hed marvel-man pe ar pec'hed marvel-zont. Epad hor buez penn-da-benn, hon Eal-mad a zikour ac'hanomp da zavetei hon ene, met poania a ra, dreist-oll, ganeomp, en heur hor maro.

Kristenien, pa vezoc'h prest da vervel, hoc'h Eal-mad a vezo en ho kichen. Pa zantoc'h eta e vo deut evidoc'h an heur da vont euz ar bed-man, pedit-hen, gant fizians, da ziouall mad hoc'h ene, ha d'he gas gantan d'ar baradoz.

SONJOMP ERVAD :

Pa 'z eo guir e ra hon Eal gardian kement a vad d'eomp, bezomp leun a anaoudegez vad, hag a garantez evitan. Goude Doue hag ar Ver'hez, lakeomp ennan hor fizians, hag, eur vech bemdez da viana, lavaromp d'ezan peden hon tadou koz:

Ha c'houi, va Eal mad, kannad Doue
Miret va c'horf ha va ene,
Va mirit diouz an drouk-spered
Ha dreist peb tra, diouz peb pec'hed.



AN TREDE DEVEZ A VIZ HERE

An Den eüruz Charles a Vlois (1316-1364)

Charles a oa mab d'eun duk euz an Anjou; genel a eure er bloaz 1316.

He dud a fellaz d'ezo rei d'ezan eur geennadurez vad ha kristen; miret a rejont ho mab er gear; kenteliet e oue eno gant daou vestr skol, daou zen a feiz krenv.

An daou-man a geennaz Charles var he zeveriou a relijion, kerkoulz ha var skianchou ar bed; evelse e oue guelet abred an duk iaouank o vale var hent ar zantelez. A veac'h ma c'houie lenn, e veze guelet o lavaret aketuz an ofis santel, ha d'an oad a zaouzek vloaz, e iune meur a vech er zizun, ouspenn ar iuniou merket gant an Iliz. An oferen a blije kement d'ezan, ma kleve an oll oferen-nou a veze lavaret e chapel ar maner.

He garantez evit ar beorien a oa ker braz, ma ranke beza lezet atao da ranna he-unan an aluzennoù a roe bemdez he dad da bemp var 'n ugent pe dregont paour.

Evelato ma oa mad da bedi, an den iaouank ne ankounac'heaz ket deveriou he stad, deski a reaz pignat var vare'h hag ambrega an armou koulz pe vell, hag ar brinsed euz he renk.

Ian III, duk a Vreiz, o veza deut da vervel, Charles a Vlois dimezet d'an ampoent d'eur brinsed euz a Vreiz, Jeann a Benthievr, a dlie a berz he c'hreg beza he heritour ha duk nevez Breiz. Ar c'hount Ian a Vonfort a zavaz en he eneb; heman a entente e oa dleet d'ezan kaout an heritach kentoc'h eget Charles, abalamour m'oa tostoc'h kar, daoust m'en doa Ian III sinet he zukach hag he oll guiriou da Charles. An duk nevez a rankaz eta enebi ouz Ian a Vonfort, ha sevel eun arme evit difen he vir.

Er brezel a reaz an daou brins an eil egile, Ian a Vonfort a oue sikouret gant ar Zaozon, ha Charles, euz he gostez, gant roue Frans. En unan euz ar c'hrogajou a reaz, Charles goude beza en em zifennet evel eul leon, a oue great prizounier pa n'en devoa tam nerz ebet mui, pa 'z eo guir, var a leverer, en devoa seitek gouli en he gorf. Ar zant a c'houzanvaz ar boan-ze heb klem, koulz hag an oll groaziou a zigasaz Doue d'ezan da c'houde.

Kaset euz an eil prizoun d'egile e Breiz, e oue taolet erfin var douar Bro Zaoz, el leac'h ma rankaz choum epad tri bloaz en eun tour e Londres, diouallet gant goardou kriz, hag a rea d'ezan goasa a c'hellent.

Daoust peger poaniuz e oa ar prizoun evitan, e kendalc'haz d'ober pinijen epad an amzer-ze, ha kreski a reaz he iuniou. Divar neuze e tougaz eur c'houriz reun, e kouskaz atao var eun tam kolo hebken, e tremenaz an darn vrasa euz an noz o pedi.

Er prizoun e reaz veu, ma c'helje distrei d'ar gear, da vont diare'hen euz a Roc'h-Derrien el leac'h m'oa bet paket ha great prizounier gant ar Zaozon, betek iliz katedral Sant-Tugdual, e Landreger. Pa c'hellaz dont diouz he brizoun, e reaz he veach, eul leo vad, diare'hen, hag eur mintinvez, dre eur reo braz. An dud, gant truez outan, a astennaz pallennoù var he hent, met ar zant a falvezaz d'ezan bale a biou, ha dre al leac'h m'oa gressa an douar; he dreid a glanzaz divar an devez-se, hag epad tri pe bevar miz goude, na c'hellaz ket poueza varnezo.

Distrei a reaz eta d'ar gear, goude eiz vloaz prizoun, ha var bouez paea seiz kant mil pezh aour d'ar Zaozon: hed an oll amzer ma oa choumet er prizoun, an dukez he c'hreg a zalc'he penn da Ian a Vonfort. Charles a rankaz en em lakât da vrezekât a nevez en despet d'ezan, rak poan en doa o velet ar goad o ruill keit all. Eun devez e kinnigaz da Ian rei d'ezan an hanter euz he zukach. An dra-man a oue kavet mad gant Ian a Vonfort, met Charles o veza bet gourdrouzet gant Jeann he c'hreg, a rankaz, evit kaout peoc'h en he di, diskleria d'he enebour na zalc'hfe ket d'he c'her. D'an 29 a viz

guengolo 1364, Charles a reaz he grogad diveza; lazet e oue dre drubarderez: er mintinvez-se e oa bet kove-seat teir guech, hag en doa resevet ar gommunion zantel. He gorf a oue enterret e Guengamp; pa 'z ejor d'he zebe-lia, e oue kavet, varnam, eur gouriz reun.

Brasa den a vrezel an amzer-ze, Bertrand du Guesclin, a lavare: « Lazet eo kalouneka den a zo bet dindan » bolz an env. »

Ar Pab Pi X en deuz diskleriet, er bloaz 1904, ema Charles a Vlois etouez an dud eüruz er baradoz.

SONJOMP ERVAD :

Peger kalet eo bet pinijennou ar zant-man! Tenn eo atao mont d'an emgann; kement-se a oa tenn, guechall dreist oll, pa ranke an den a vrezel dougen eur guiskamant houarn ha dir pounner meurbet. En despet da-ze, Charles a Vlois a zouge c'hoaz eur porpant reun dindan he zillad houarn, eur porpant hag a dlle he verzeria.

Penaoz a kredomp ni klem kercent ha m'on deuz an dis-tera riou, ienien da c'houzanv er goanv, kercent ha ma 'z euz eun nebeut tomder en hanv? Mar on deuz c'hoant mont da varadoz an Aotrou Doue, eo red d'eomp gouzanv a galoun vad an nebeudik diezamant a gavimp bemdez er vuez: disterik eo kement-se e kenver ar pez o deuz gonzanvet ar zent.

AR PEVARE DEVEZ A VIZ HERE

Sant Fransez Assis

(1182-1226)

Ganet e kear Assis er bloaz 1182, ar zant braz-man a oue hanvet Ian da zeiz he vadiziant: divezatoc'h eo e oue great Fransez anezan.

O veza m'oa choazet da zigas da zonzj d'an dud euz paourentez hag humilite Mab Doue var an douar, ar zant-man a zo bet ganet var ar c'holo en eur c'hraou, evel Hor Zalver. He dud, mare'hadourien kristen ha pinvidik, a zavaz mad anezan; Fransa a oue dizale roue paotred iaouank kear, rak bez' en doa danvez ha kaloun vad, ha trei a reaz gant ar bed eur pennad, heb koll he burete evelato.

Doue a c'houmezaz an den iaouank a nebeudou, dre ar boan, dre ar c'hlenved; eun devez, Fransez a roaz eur pred braz, an diveza, d'he oll vignouned, hag a lavaraz kenavezo d'ar bed.

O veza digouezet gant eun den lor demdost da Assis, e reaz da genta he zonzj da vont ebioù heb sellet outan, gant aon da baka ar c'hlenved speguz-se, met da c'houde e lavar en he galoun: « Pa 'z eo guir n'oun mui den ar » bed, eo red mad d'in diskonez oun da Zoue, » hag e tiskennaz divar he varc'h evit pokât d'an den lor, ha rei eun aluzen gaer d'ezan. Divar neuze, hed he vuez, an den iaouank a oue da Zoue e peb tra.

Mont a reaz d'an hospitaliou da entent ouz ar re glanv, ouz an dud lor; entent a rea outo e peb doare, hen, ar guella savet euz tud Assis; mont a reaz da bardouna da iliz Sant-Per e Roum, eno e roaz he oll arc'hanf d'an iliz pe d'ar beorien; troka a reaz he zillad brao ouz truillou ar paoura hini a oa er porched, hag e tistroaz d'ar gear, o veva divar an aluzen.

E kichen Assis e oa eun iliz o vont da fall, Fransez a ieaz en iliz-se da c'houlen digant Doue sklerijen ha nerz. Ha Christ ar grusifi a gomzaz dre vuzud, hag a lavaraz d'ezan: « It, Fransez, ha savit va zi a gouez en he » boull. » Fransez a zavaz, goude kalz goaperez a berz he vignouned kenta, iliz Sant-Damian, met galvet e oa gant Doue d'ober eul labour all kalz brasoc'h: kristenien an amzer-ze o doa dilezet an humilite hag ar baourentez evit beva eaz, heb poan, ha Fransez a dlle miret ouz ti an Aotrou Doue da goueza en he boull, da lavaret eo, nevezi ar bed kristen dre ar baourentez hag ar garantez.

Tad Fransez, re c'hros kristen evit asanti da vuez

burzuduz he vab, a reaz d'ezan ober etre he zaouarn an dilez euz kement en doa; ha Fransez a roaz d'ezan betek an dillad a zouge: « Brema, emezan, e livirin gant gui- » rionez komzou ar Bater: Hon tad pehini zo en env. » Fransez a oa neuze pemp bloaz var 'n ugent benag.

Goude m'en devoue savet a nevez iliz Sant-Damian, Fransez a glevaz lenn eun devez ar c'homzou-man euz an Aviel: « Ne zougit nag aour, nag arc'hant, na diou » viskamant, na boutou, na baz. » Dilezel a reaz raktal pep tra evit bale diarc'hen, heb eur guenneg en he c'ho- del. Neuze ec'h en em roaz da brezeg ar binijen.

Kalz tud a icaz d'he heul, setu ma savaz eun Urz ne- vez, hag er bloaz 1219, e oa dija ouспенr pemp mil den emman. Rei a reaz neuze guiskamant al leanezed da zan- tez Klara, ha d'eur maread merc'hed iaouank o doa c'hoant trei kein d'ar bed, ha beva er baourentez.

Divezatoc'h c'hoaz, Fransez a zavaz an Trede Urz evit an dud a ranke choum da veva er bed, hag o doa c'hoant ren eur vuez pinijennuz. An trede Urz a zo bet meulet gant ar Pabed, hag a ra atao kalz a vad en Iliz.

Fransez a oa ken humbl ma ehomaz atao heb beza be- leg; ken humbl, ma reaz d'eun all a benn eun nebeud bloaveziou, ren an Urz en he leac'h. Guelet a reaz, aliez, Hor Zalver Jesus-Christ hag ar Verchez Glorius Vari; bez en devoue digant Hor Zalver he-uman, galloud da embann induljans kaer ar Porsionkul. Ar zant a reaz miraklou dreist kount: rei ar vuez d'ar re varo, ar pare d'ar re glanv, ober a rea d'ar pesked ha d'al laboused dont d'he zelaou, lakât a reaz bleiz Gubio da veza dôn.

Evel m'eo bet lavaret: d'ar 17 a viz guengolo 1224, ar zant a resevaz en he izili merkou Gouliou Hor Zalver ben- niget; divar neuze, e sonjaz aliesoc'h c'hoaz e Pasion Je- sus-Christ, betek ma teuaz da veza dall, kement a zae- lou a skuillaz o sonjal e myster hon redempcion.

Pa gouezaz klanv bras, ar zant a vennigaz kear Assis; da c'houde, e reaz he c'hourvez var an douar noaz en eur lavaret: « N'em boa netra d'in en eur c'henel, n'em » bezo netra d'in en eur vervel. »

Tremen a reaz d'ar 4 a viz here 1226: he gorf, dis-

trouknet gant ar binijen, a zeuaz da viska dioc'htu eul liou flamm ha koant.

SONJOMP ERVAD :

Peger paour en deuz bevet ar zant-man! Nag hen, na ni- kun euz a venec'h he Urz n'o deuz bet biskoaz netra d'ezho! Ha ni, ma ne vevomp ket ker paour-ze, ha distag eo da viana hor c'haloun euz madou ar bed-man?

Ar zant-man en deuz great pinijen hed he vuez: en em roet eo bet da Zoue evit mad. Peb guech en hor buez on deuz lavaret da Zoue: « Me a zo d'eo'h evit atao: eiz dez » goude ec'h en em roemp adarre d'ar bed. »

AR PEMPED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Mauris, Abad

(1127-1195)

Ar zant-man a zo ganet e kichen Loudeac, met en es- kopti Guened. Kaset e oue abred d'ar skol, ha troet ke- nan e oa gant ar studi. Eun deiz, e oue dalc'het er gear da ziuall ouz ar brini eun dachen ed nevez gounezet, met ar bugel santel a zastumaz, dre c'hras Doue, ar brini en eur c'hranch, hag o veza klozet varno, a redaz ker- kent d'ar skol. N'eo ket souez eta mar teuaz da veza gui- zieg var skianchou ar bed, ha var ar skianchou sakr. Mont a reaz da Baris da beurachui he studi, ha resevet e oue doktor. Azalek he vugaleach en devoa ar zanj d'en em rei da Zoue, hag o tistrei euz a Baris e kasaz he zanj da benn. Dont a reaz da gouent Langonnet, er penn pella euz eskopti Kerne, d'ar mare-ze.

Ar manac'h nevez a heuillaz, euz he oll galon, reolen sant Bernard; rei a reaz, d'an oll, skoueriou an humilite hag ar zentidigez, daoust d'ezan da veza eun doktor guiziek. Abenn tri bloaz, ar venec'h he Vreudeur her

choazaz da veza tad abad er gouent. Mauris ho renaz gant dousder ha furnez: miret a reaz an urz vad en ho zouez; doujet ha karet e oa ganto. Karet a rea kalz ar baourentez; mouga a rea en he galoun ar c'hoant da gaout madou ar bed-man. Duk Breiz hag an eskibien a anaveze he vouisiegez hag he zantelez, hag a deue aliez da c'houlouen he aliou divarbenn deveriou ho c'harg.

Abenn tregont vloaz e roaz he zilez a abad evit kaout muioc'h a amzer da bedi Doue, ha da zonzjal en he vadeleziou. Hogen, daou vloaz goude, an duk Konan IV, he vignoun, a deuz da bedi sant Mauris da vont da zavel eur gouent nevez e koat Carnoet, e parrez Clohars, tostik da ster Kemperle. Ar zant a drugarekeaz an duk da veza sonjet renta evelse gloar da Zoue, hag a gemeraz gant joa ar garg fiziet ennan.

O veza dibabet eun nebeut menec'h euz a Langonnet, ar zant a zavaz, e koat Carnoet, ar gouent a zo bet ker brudet abaoe. Evelato, n'eo ket heb poan e teuaz ar venec'h a benn euz ho labour: ar c'hoat a oa gouez, fall e oa an douar, diez braz e oa kaout peadra da zibri, ha goall denn eo labourat heb tam. Met Doue a deuz da zikour ar venec'h dre vuzudou braz, hag eun itroun euz a Gemperle ho zikouraz ive dre an danvez a roaz d'ezo.

Ar zant en devoa an donezoun a viraklou. Razet a oa leun ar gouent; ober a reaz d'ezo mervel. Eleiz a vleizi a oa er c'hoat; Mauris a zifennaz outo ober drouk da zen, ha divar an deiz-se betek he varo, den ebet a zivardro na oue taget gant ar bleiz. Digas a reaz pemp bugel euz a varo da veo, savetei a reaz aliez ho buez d'ar vartoloded e riskl d'en em goll, kas a reaz an drouk-sperejou er meaz euz ar c'horfou m'ant enno. Erfin, goude beza renet abbati Carnoet epad pemzek vloaz, e varvaz eno leun a veritou, er bloaz 1195, d'he eiz vloaz ha tri-ugent. He gorf a oue enterret er gouent. Eun niver braz a dud klanv a gavaz ar pare en eur bedi sant Mauris, lod all a oue saveteat d'ezo ho buez gantan. Ar burzudouze lakeaz tud ar vro da gaout kalz a zevosion evitan, ha breman c'hoaz sant Mauris a zo henoret merurbet var dro Kemperle.

D'ar zeiz ha d'an eiz a viz eost euz ar bloaz 1880, pa oue digaset eul loden euz relegou ar zant e prosesion euz a Garnoet da Langonnet, e oue lidet eur gouel kaer evit ho henori, hag e oue gueleet an oll gristenien euz ar parrezion divar-dro o tiredet da zaludi relegou ho zant muia-karet.

SONJOMP ERVAD :

Red eo ma vije muioc'h a feiz hag a relijion etouez hon tud koz eget na 'z euz hirio en hon touez-ni. Guechall-goz, e velet kalz goazed ha kalz merc'hed, tud pinvidik ha tud desket, o kuitat ar bed evit en em rei oll da Zoue, lod en ermitachou, lod er c'houlouen. Ar brinsed hag an dud pinvidik a roe, a galoun vad, leve ha douarou evit sevel kouenchou, hag eno e kavent ho-unan eur plas evit zonzjal en ho zilvidigez.

An dud a vremen, siouaz! n'o deuz nemeur a zonzj nemet da zastum danvez ha da gemeret plijadur; ne zonzjer ket kalz e Doue nag en eternite: beva a rear evel pa ne dlefet ket mervel, pe da viana evel pa ne vefe na haradoz nag ifern. Pebez dallentez!

AR C'HOUECHVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Bruno, Abad

(1040-1101)

Ar zant-man, ganet e kear Kologn, a roaz abred merkou anat euz he garantez birvidik evit an Aotrou Doue. Gant an dra-ze, o veza ma oa troet kalz var ar studi, he dud her c'hasaz da skol-veur Paris. Eno, e berr amzer, e teuaz da veza ken desket, ma oue choazet gant Jervais, arc'heskop Reims, evit beza sekretour braz he arc'heskopti.

Bruno ne jomaz ket pell er garg-se, ha setu ama pe-rak: eur mignoun d'ezan hag en doa darempredet kalz epad m'edo oc'h ober he studi e Paris, o veza marvet er gear-ze, Bruno a iez d'an enterramant.

An oll, e Paris ha tro-var-dro, o doa eun istim vraz evit an hini maro, rak ne oa netra da rebech d'ezan. Dioc'h ma lavar an historiou koz, a greiz offis an enterramant, pa oue kanet ar c'homzou-man: « Responde » mihi » hag a ziniñ e brezonek: « Respontit d'in », korf an hini maro a zavaz euz he arched, en eur laosket ar c'homzou-man hag a dreuzaz kaloun kement hini a oa en iliz: « Tamallet oun gant justis Doue! »

An oll, spountet, a dec'haz diouz an iliz, hag an arched a joumaz eno betek an devez varlere'h. Antronoz, e oa e'hoaz muioc'h a dud en enterramant, ha p'edor o kana ar memez komzou: « Responde mihi, respountit d'in », setu adarre korf an den maro o sevel, hag o lavaret gant eur vouez truezuz: « Barnet oun gant Justis Doue! » Ar veleien ker spountet hag an dud all, a e'hortozaz e'hoaz eun dervez evit achui an enterramant, met d'an trede devez, pa errujot gant ar memez komzou euz an offis: « Responde mihi, respountit d'in », gant eur vouez spoutusoc'h ha skrijusoc'h eget biskoaz, an hini maro a lavaraz: « Koundaonet oun gant Justis Doue! »

Divar neuze, Bruno ha c'houec'h den iaouank all a lavaraz evit mad, kenavo d'ar bed, d'he vadou ha d'he henoriou. Mont a rejont asamblez da gaout sant Hug, Eskop Grenobl, hag e c'houlenjont digantan, en he eskopti, eur plas distro, e leac'h m'ho devije gellet tremen an nemorant euz ho buez er binijen.

Sant Hug a roaz d'ezo menezioù hanvet Chartreuz; e kreiz ar menezioù-ze goloet a ere'h, epad an hanter euz ar bloaz, ha leun a loaned gouez, Bruno hag he c'houec'h koumpagnon a iez da joum. Sevel a rejont eno, gant kalz a boan, eur chapel vian, en honor d'an Itroun-Varia, hag en dro d'ezi, seiz lochennik, unan evit peb hini anezo.

Evito da veza tost an eil diouz egile, ne gomzent ket etrezo, nemet dioc'h red. Iun a reant bemdez, na ze-

brent ket a gig; guisket paour e oant, ha dindan ho dillad all e tougent eur zae reun. Dioc'h an noz e tremement, er chapel, peder heur holoraj bemdez, azalek dek heur betek diou heur goude an hanter-noz: epad an amzer-ze e sonjet e finvezioù diveza an den, hag e pendent, a greiz ho c'haloun, evit distro ar bee'herien da Zoue. En deiz, Bruno hag he c'houec'h koumpagnon a laboure, heb damant d'ho c'horf.

Abenn nebeut, tud iaouank all, e'hoant d'ezo en em zantelât, a c'houlennaz beza resevet en ho zonez. Neuze, en eur vouez, abalamour d'he zantelez parfet, an dud-se a joazaz Bruno, evit ho zuperior kenta. Setu penaoz eo bet savet, en hor bro Fans, Urz ar Chartreuzed, menee'h hag o deuz great kement, dre ho fedennou hag ho finijennou, evit silvidigez an dud.

O veza klevet hano euz santelez Bruno, Urban II a reaz d'ezan dont da Roum. Bruno a zentaz dioc'htu, met e leac'h chom e kichen an Tad santel ar Pab, ez eaz d'ar C'halabr, en eur plas distro. Eno en devoue diskibien nevez, hag a gemeraz ive an hano a Chartreuzed.

Bruno ne vevaz ket pell ken. Ne oa e'hoaz nemet tri-gent vloaz benag, met Doue a gavo en doa he zervicher mad gounezet he gurunen er baradoz. O veza eta resevet he zakramanchou diveza, gant feiz ha karantez, Bruno a rentaz he ene santel d'he Grouer, d'ar 6 a viz Here, er bloaz 1101.

SONJOMP ERVAD :

« Tamallet oun gant Justis Doue, barnet oun, koundaonet » oun; » ar c'homzou-ze lavaret gant eun den maro, a reaz da zant Bruno, ha da c'houec'h den all, kuitât ar bed evit tremen er binijen an nemorant euz ho buez.

Ni ive a varvo. Pe da vare? ne c'houzomp ket. E pe leac'h e varvimp-ni? Er gear? En hor guele? Er park? Var an hent? E koumpagnunez tud vad, pe e koumpagnunez tud hent? Ne ouzomp ket ken nebeut. Met kerent ha ma vezomp bet skoet gant ar maro, n'euz forz e pe leac'h e vezo, hon ene a vezo raktal dirak an Aotrou Doue evit beza barnet.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Nikas, Eskop ha Merzer

Labourit a zevri, kristenien, da zantelât hoc'h eneoù evit m'ô pezo, eun deiz, ar c'hras da velet er baradoz, ar zent kalounek-se o deuz dre ho frezegemou, dre ho buez santel, gounezet hor bro Frans da Zoue. Sant Nikas a zo unan euz an ebestel deut gant ar re genta da brezeg an Aviel en hor bro.

Ganet e oa e kear Atheen er Gres, gounezet e oue d'ar feiz gant an abostol sant Paol, ha dont a reaz da heul sant Denis da Roum, ha da c'houde d'ar Frans.

Sant Denis a joumaz e Paris, ha sant Nikas a iezaz da gear Rouen.

An Tad Santel ar Pab Klemant, pa oue diskleriet d'ezan e oa bet lakeat sant Denys d'ar maro, e Paris, a reaz he zonz da gas en he leac'h ebestel kalounek ha santel.

Gervel a reaz eta sant Nikas da Roum; her sakri a reaz eskop. Rei a reaz d'ezan evit he zikour, ar beleg sant Quirin hag an avieler sant Sauvikul; goude beza ho beniget ho zri, ar Pab ho c'hasaz d'ar Frans da zispenn rondou sant Denis evit silvidigez an eneoù.

Sant Nikas hag he zaou ziskibl a iezaz en hent; prezeg a rejont ar feiz dre gement leac'h ma tremenent, dont a rejont zoken tro var dro da Baris, met pa veljont eo en Normandi o devoa an dud ar muia ezoum a gelemdurez kristen, sant Nikas a joumaz dre ar c'harter-ze gant he zaou ziskibl. Labourat a rejont a zrevi, heb ehan koulz lavaret; ne skuizent ket o vont dre ar vro da brezeg, ober a reant miraklou ker kaer, ha ren a reant eur vuez ker santel ma teujont a benn gant sikour gras Doue, da c'houmit eun niver braz a eneoù.

Meur a hini, evelato, a joume aheurtet en ho dallentez

hag ho fallagriez, hag a zarre ho daoulagad da sklerijen ar feiz. Ar baianed-man a zeuaz da gaout Fesennin, gouarnar Paris, evit tamall Nikas da ziskar relijion an doueou. Fesennin, en doa lakeat d'ar maro sant Denis hag he zaou ziskibl, a iezaz en e gear pa glevaz lavaret pegement en em skigne adarre ar relijion gristen dre ar vro. Lakât a reaz digas dirazan Nikas hag he zaou goumpagnoun, hag e tiskleriaz d'ezo o dije da c'houzav poaniou kriz ma ne adorjent ket an doueou.

Sant Nikas a respountaz heb aoun: « Seul vui e c'hou- » zavimp, seul vrasoc'h e vezo hon eürusted: nag ar » boan nag ar verzerenti na raint d'eomp nae'h Hor Zal- » ver beniget. »

Neuze e ouent karget ho zri a chadennoù ha taolet er prizoun: eno e choumjont epad pell amzer da c'houzav sec'hed, naoun, ha bep seurt poaniou. Erfin ar gouarnar kriz a roaz urz d'ho dibenna: an tri merzer a oa laouen o klevet ho zetans, hag a ginnigaz gant levezaz ho buez da Zoue.

SONJOMP ERVAD :

An tri zant-man o deuz great kalz a hent evit dont e Frans da labourat evit silvidigez an eneoù. Labourat a rejont gant kalz a skuizder; bez' e oant bepred e riskl da goll ho buez.

Meuli a reomp nerz-kaloun an ebestel-man, met ha klas-ket hon euz-ni gounit eun ene hebken da Zoue? Daoust hag hor c'houstians er c'houtrol, na damall ket d'eomp oump bet kaoz d'eun ene benag d'en em goll, dre hor skoueriou fall pe en eun doare all benag? Pebeuz torfet eo hennez, siouaz!

Lakeomp evez na rofemp goall skouer d'hon nesa; ma n'oump ket galvet da gelen ar re all dre hor c'houzou pe hor skridou, kelenomp anezo da viana dre hor skoueriou.



AN EIZVED DEVEZ A VIZ HERE

SANTEZ BERC'HED, INTANVEZ

Kerkent hag he bloaveziou kenta, ar zantez-man, ganet er Sued er bloaz 1302, a oue, evit an dud a oa en dro d'ez, eur skouer var an oll vertuziou kristen.

D'an oad a zek vloaz, o veza klevet diskleria ar Bassion, e tirollaz da lenva, dre d'uez ouz Hor Zalver. En noz varlerc'h, Jesus en em ziskouezaz d'ez, e giz m'edo var ar groaz: ar goad a ruille euz he zaouarn hag euz he dreid, treuzet, tu ha tu, gant tachou braz.

« Piou, o va Zalver, a c'houlennaz Bere'hed, piou en » deuz ho lakeat en eur stad ken truezuz? » Jesus a respountaz d'ar zantez: « An dud a ra fae var ar gour- » e'hemennou, an dud a freuz va lezen eo am laka da » e'houzanv evelhen. » Divar an deveze-se, betek fin he buez, Bere'hed na zonzaz biskoaz e Passion Hor Zalver Jesus-Christ, heb lenva dourek.

Var ali he zad, e timezaz d'eun dijentil hanvet Ulfon, gouarner an Nerisii: betek neuze, Bere'hed a oa bet skouer ar merc'hed iaouank; eur vech dimezet, e teuz da veza skouer ar priejou hag ar mamou kristen.

Doue a roaz d'ez eiz krouadur, pevar mab ha peder merc'h. Daou anezo a varvaz, dioc'htu goude ho badi-ziant; ar e'houe'h all, Bere'hed ho zavaz e doujans hag e karantez an Aotrou Doue, hag hini ebed anezo na de- c'haz divar an hept mad. Ha n'eo ket souez. Setu ama ar pez a lavare ar zantez d'he faotred iaouank: « Bezit sonj » atao, emezi, euz ar boan en deuz gouzanvet Jesus evit » ho silvidigez; digemerit hen aliez en ho kaloun, dre ar » gommunion. Bemdez pa zavit, pedit an Aotrou Doue » d'hoc'h hench, en hoc'h oll oberou, ha grit sin ar groaz » evit merka oc'h d'ezhan. » Ma karje an oll mamou

komz er giz-se ouz ho faotred ha merc'hed iaouank, n'o devije ket, ken aliez, tro da lenva var ho buez fall.

Ouspenn ma soursie ouz ene he bugale, e soursie ive ouz ene he fried. Ulfon a oa dija eur e'hristen mad, araok he eured, met Bere'hed hen dougaz da zervicha guelloc'h e'hoaz an Aotrou Doue. Ober a reaz d'ezan lavaret bemdez offis bian ar Vere'hez, ha kovez, bep guener.

Gant an dra-ze, Bere'hed ne ankounac'hea ket an oberou a drugarez: lakât a reaz sevel eun hospital evit an dud paour ha klanv. Eno, dre he urz, e veze ententet, er memez amzer, ouz an e'horf hag ouz an ene. Ar zantez he-unan a veze guelet o louzaoui an dud keiz-se, egiz ma vije bet plac'h dindanno.

Goude maro he fried (mervel a reaz evel eur zant), Bere'hed a vevaz e'hoaz tregont vloaz. An amzer-ze a dremenaz oc'h ober bep seurt piniennou: dougen a rea dillad dister, ne devoa evit guele nemet eur pallen asten- net var tri pe bevar blanken, iun a rea, pevar devez er zizun, ha d'ar guener, ne gemere netra nemet bara ha dour.

Evit kreski he c'harantez e kenver Hor Zalver Jesus-Christ, e 'z eaz da bardouna da Jerusalem, e leac'h m'en deuz skuillet he e'hoad evit hor zavetei.

E Valtein, he bro, Bere'hed a zavaz eur gouent evit ar merc'hed, hag hi he-unan a skrivaz ar reolen a dlie beza heuillet gant al leañzed nevez. An Urz-se a zo bet han- vet, a e'houdevez, Urz sant Salver.

Epad he buez, Doue en doa aliez diskleriet da zantez Bere'hed traou kaer divar-benn guirioneziou ar feiz. Evit brasa mad an eneo, ar zantez e deuz skrivet ar pez e doa klevet gant Doue.

Erfin, goude eur e'hlenved poaniuz hag a badaz ous- penn bloaz, ar zantez-man a varvaz e peoc'h gant Doue, er bloaz 1373, en he unnek vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

Eviti da veza servichet mad an Aotrou Doue, epad he oll buez, santez Bere'hed e deuz great, er memes tra, pini- jennou kalet. Perak? Abalamour ar binijen a zo evit an den,

an doare guella da vouga he dechou fall. Greomp pinijen eta, o tec'het diouz an dud, diouz al leac'hiou, diouz ar c'hoariou a c'helfe hon dougen d'ar pec'hed. Greomp pinijen c'hoaz, o viret ar vijel d'ar guener, bep sizun; ha be-vech m'eo merket d'eomp gant an Iliz, epad ar bloaz. Erfin, greomp pinijen, o c'houzanv, gant pasianted, an traou koun-trol, an diezamanchou, ar c'hlenvejou a erru ganeomp.

AN NAVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Denis, kenta Eskop Paris

Denis, var a lavar an historiou koz, a deuaz er bed-man, e kear Atheen, nao bloaz goude donedigez Hor Zalver Jesus-Christ. Pevar bloaz var 'n ugent benag e thie eta beza, pa varvaz Hor Zalver var ar C'halvar.

Da genver an devez benniget-se, deiz guener ar groaz, Denis a oa en Ejipt, e kear Heliopolis. Pa velaz, azalek krez-deiz betek teir heur, an denvalijen o c'holoi an douar, Denis, gouiziek-braz, a lavaraz: « Ne ouzon ket » petra zo a nevez, met unan a zaou, pe mestr ar bed a » zo o tivoaska poan, pe ar bed a zo direnket. »

Eun nebeut goude, Denis, hag a oa c'hoaz paian, en em gavaz gant sant Paol, e kear Atheen; an abostol braz o veza prezeget dirazhan divar-benn Jesus, divar-benn he vuez hag he varo, Denis a deuaz da zonzj d'ezan euz ar pez en doa gueleit he-unan, en Ejipt, en heur ma varve Hor Zalver, ha ker buan e c'houlennaz beza kristen. Divar neuze, ar zant a joumaz tri bloaz e kompagnunez sant Paol, hag a resevaz digantan an Urziou Sakr.

Evel m'en deuz her skrivet he-unan, Denis a oa e kear Jerusalem, gant an ebestel, pa varvaz an Itroum Varia; kouls hag an Ebestel, tri devez goude, e velaz e oa bet savet korf Mam Doue, d'ar baradoz, gant an elez.

An Abostol braz sant Paol a lakeaz Denis da eskop e

kear Atheen. Eno, ar zant ne espernaz netra evit goumit kaloumou he genvroiz da feiz Jesus-Krist O klevet e brezegennou nerzuz hag helavar, eur maread anezo a zilezaz fals-kredennou ar baianed, hag a zeuaz da veza kristenien euz ar re vella.

Ar Pab sant Klemant, o velet peger mad e labouré Denis, e kear Atheen, evit silvidigez an eneoù, a c'hour-c'hemenaz d'ezan dont en hor bro Frans a oa neuze eur vro baiant. Evit he zikour en he labourou abostolik, ar Pab a roaz d'ezan daou gompagnon: eur beleg, he hano Eleuther, hag eun avieler, he hano Rustikus. Nebeut goude e oant ho zri e kear Paris, ha Denis a stagaz dioc'h-tu d'al labour. Diskouez a reaz freaz d'an dud piou eo an Doue en deuz krouet ar bed, ha ker freaz all e komzaz d'ezo euz Jesus, mab Doue, deut var an douar-man evit hor zavetei.

Epád ma labouré Denis, a vir vella, evit skigna ar feiz, impalaer Roum a goundaonaz d'ar maro kement hini a zouge an hano a gristen.

D'ar mare-ze, hor bro Frans a oa dindan galloud mistri Roum; Fesennin, an hini a c'houarne hor bro, euz he berz, a reaz kerkent kregi e sant Denis, hag ober d'ezan bep seurt iudazerez. Met Doue, evit sklerijenna an dud, a ziskouezaz he oll c'halloud, o fioual, a-vel d'an oll, Denis, he eskop muia-karet.

Goude beza bet eun nebeut er prizoun, Denis a oue, da genta, astennet var eur c'hrill-houarn, glaou beo didanni; met an tan, dre urz Doue, ne reaz drouk ebet d'ezan. D'an eil, e oue laosket varnan loaned gouez: met e leac'h sailla varnan, al loaned gouez, dre c'halloud Doue, a deuaz da c'hourvez dirazan, hag, evel gant respet, da lipat treid ar zant. D'an trede, e oue taolet en eur fourn raz beo, en esper e vije devef enni, e berr anizer, met ar zant a deuaz er meaz euz ar fourn raz, ker iac'h ha biskoaz.

En despet d'an oll burzudou-ze, ar gouarner paian Fesennin, dallet gant he gounnar eneb ar relijion gristen, a reaz dibenna Denis, hag asamblez gantan, he zaou gompagnoun kenta, Eleuther ha Rustikus, var eur menez tost da Paris.

Sant Denis a oa var dro kant vloaz, pa oue merzeriet. Var a gounter, goude beza bet dibennet, e tougaz he benn etre he zaouarn, varned diou leo ac'hano, betek al leac'h hanvot hirio Sant-Denis. Ar mirakl nevez-man a reaz da gals tud digeri ho daoulagad da sklerijen ar Feiz.

En honor da zant Denis, e oue savet, da genta, eur japel var he vez, ha da c'houde, eun iliz euz ar re gaera. Eno eo e veze enterret korfou rouaned Frans.

Var ar menez m'eo bet merzeriet sant Denis hag he zaou vignoun, eo e savet hirio iliz veur ar Galoun-Zakr; ar menez-se a zo bet great anezan abaoue Menez ar Verzerien (Montmartr pe Mont des Martyrs).

SONJOMP ERVAD :

Hirio, var ar menez m'eo bet dibennet sant Denis, e veler iliz Montmartr, konsakret da Galoun Zakr Jesus. Ia, mil bennoz a dleomp lavaret da Galoun Jesus en deuz digaset d'eomp sant Denis, en deuz tennet ar Frans, hor bro, euz fank ha lousdouni ar pec'hed. Goulennomp ive digant Kaloun Zakr Jesus, ma roio d'eomp atao, en despet d'an dud difeiz, eskibien ha beleien hag a zalc'ho en hon touez, ar peoc'h hag an urz vad, hag a verko d'eomp hent ar baradoz.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Fransez Borjia, Jesuist

(1510-1572)

Fransez Borjia a zo ganet er Spagn, d'an eiz var 'n ugent a viz here, euz ar bloaz 1510. He dad a oa duk a Gandii; he vam, ar brinsez Jeann a Aragon.

He dad hag he vam a boaniaz da ober anezan, dreist pep tra, eur c'hristen mad. Desket e oue d'ezan abred kroazia he zaouarnigou, ha lavaret hanoiou santel Jesus

ha Mari; dre-ze, kerkent ha ma ouie bale, brasa plijadur Fransez a oa mont d'an iliz. Epad an oferen hag an offisou all, he zaoulagad a veze atao o para var ar veleien evit gnelet petra a reant ouz an aoter pe er c'hœur. Kae-roc'h a zo: bevech ma kleve eur brezegen benag, e talc'he sonj mad anezi, hag eur vech distro d'ar gear, e tisklerie da dud an ti ar pezh en doa lavaret ar beleg er gador.

Bianik c'hoaz, Fransez a gare he dad hag he vam, e giz ma c'houlenn an Aotrou Doue, da lavaret eo, pedi a rea aliez evit ho zilvidigez. Pa varvaz he vam, ne oa ket c'hoaz dek vloaz; er memes tra, d'an oad-ze, anezan he-unan, gant aoun na vije dalc'het ene he vam e tan ar purkator, e reaz piniennou braz.

Pa oue krog en he zeitek vloaz, an impalaer Charles V, a roaz da Fransez eur garg en he balez, met ar zant a iez di en despet d'ezan. Gouzout a rea e vije eno e riskl d'en em goll. Evit miret he galoun atao pur ha chast, Fransez a bede kalounek ar Verchez Vari, hag a dostea, aketusoc'h c'hoaz eget kent, ouz Sakramant ar Binijen hag ouz Sakramant an Aoter.

He zevesion na vire ket outan da ober he labour er palez kouls ha n'euz fors piou; rak a benn eun nebeut, Charles V hag an Impalaerez Isabell o devoue ar brasa fizians emman. Ne veze great netra a vraz er palez, pe er rouantelez, heb ali Fransez.

Neuze, var goulenn an impalaer he-unan, Fransez a gemeraz da bried eur plac'h iaouank euz ar renk huella, ar brinsez Eleonora a Gastro. Doue a vennigaz ho dimizi, en eur rei d'ezo eiz krouadur.

Eun devez, pa zonje d'an dud e chounje atao Fransez Borjia er bed, ec'h en em gavaz gantan eun dra hag a zistagaz neat he galoun euz ar madou hag an henoriou a gaver var an douar-man.

E kreiz he brud, an impalaerez Isabell a oa bet skoet gant ar maro. Fransez a oue karget gant an impalaer he-unan da gas ar c'horf euz a gear Toled da gear Grenad, e leac'h ma tlie beza enterret. Evel m'edo ar c'hiz neuze, araok an enterramant, e oue digoret an arched, evit gnelet ha korf an impalaerez eo a oa, e guirionez, emman. Ho-

gen, pebeuz rann-galoun! oll gened an impalaerez Isabell a oa dija kollet. He bizach, guechall ker koant, he daoulagad ker sklear, he muzellou ker ruz, a oa heuzuz da velet. Fransez a joumaz mantret.

En noz, ne gouskaz banne, hag e reaz he zonzj d'en em denna euz ar bed, ma choumje beo varlere'h he bried.

Evelato, evit senti ouz an impalaer Charles V, Fransez a rankaz c'hoaz mont da c'honarner er C'hatalogn.

Lakât a reaz buan eun urz kaer er vro, met he bried a gouezaz klanv braz. Ar zant a bedaz epad meur a zervez, ober a reaz aluzennou pinvidig evit goulenn digant Doue ar iec'hed evithi, met eun nosvez, eur vouez euz an env a ziskleriaz d'ezhan: « An distro d'ar iec'hed na ve eun dra vad nag evithi, nag evidoc'h. » Fransez a respountaz kerkent: « Ho polôntez bezet great, o va Doue, n'eo ket va hini eo. Kinnig a ran d'eoec'h buez va fried, koulz ha va hini hag hini va bugale. » Prestik goude, Eleonora a varvaz santelamant.

E'leac'h tee'het dioc'htu diouz ar bed, Fransez a joumaz tri bloaz c'hoaz en he garg, evit lakât ar re gosa euz he vugale en ho renk. Met he vuez, epad an amzer-ze, a oue eur burzud a zevosion, rak en desped d'an oll dregas en doa en he garg, e kave amzer da bedi epad hir amzer, da goves ha da gommunia bemdez. Tud, hag a oa devot var ho meno, a lavaraz d'ezhan: « Na dlefac'h ket kommunia ken aliez-se. » Met Fransez a gendalc'haz, var alion sant Ignas a Loyola.

P' en devoue renket mad peb tra, ar zant a ieaz en Urz sant Ignas, Urz an Tadou Jesuisted, hag a oue beleget. Er gouent koulz hag er bed, Fransez a oue eur skouer evit an oll.

Abarz ar fin, petra benag n'en em gave ket d'in euz eun henor-ker braz, e oue hanvet da zuperior jeneral he Urz. Mervel a reaz er garg-man, leun a veritou, er bloaz 1572, d'he zaou vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

O velet korf an impalaerez Isabell, bet ker brudet evit he gened, deut, en eun taol, da veza ken heuzuz, Fransez

Borjia a zistagaz var neat he galoun euz madou hag henoriou ar bed. Ni ive, sonjomp aliez e rankimp mervel. Ar zonz-ze a roio nerz d'eomp d'en em zistaga, da vihana, euz kement a zo pec'het braz, hag a c'helfe hor c'has d'an ifern.

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Melar, Merzer

Budik-Meur, roue Kerne, en devoue daon vab: Milio ha Rivod. Goude maro an tad, ar c'hosa, Milio, a oue lakeat da roue. Kemeret a reaz da bried ar brinsez Aurelia, ha Doue a roaz d'ezo eur mab hanvet Melar.

Epad ma renaz Milio, Kerneviz a oue eüruz. An historiou koz a lavar ne oue na skourn, nag ere'h, na glao re vraz: ho douar a zougaz kement a frouez, m'o doa Leoniz ha Tregeriz avi outo. Eün, leal ha devot, Milio ne renaz nemet eiz vloaz, lazet e oue gant he vreur Rivod, dre gasouni.

Pa glaskaz Rivod ren rouantelez Kerne en hano he niz Melar, paotrik seiz vloaz, ha miret Melarik en he gichen, pennou braz ar vro a lavaraz: « Ren a reoc'h, » rak ar guir-ze oc'h euz, met ho niz a vezo savet gant » an dud a iliz betek ma vezo deut da veza den aoualc'h. » Drouk ennan, Rivod a c'houe'hemennaz troue'ha d'he niz he droad kleiz hag he zourn deou: « En doare-ze, » emezan, na c'hello na pignat var vare'h, na skei gant » ar c'hleze; ar galloud a joumo d'in. » Melar a oue kaset da di an aotrou 'n Eskop.

Eskop Kerne a gemeraz ar garg euz ar bugel, ken truezuz he zoare, hag hel lakeaz en eur gouent mence'h. Eno ar bugel santel, laeret digantan he gurunen a roue ha madou ar bed-man, a zavaz he galoun etrezek madou ar bed all ha rouantelez an eneo. En desped d'he iaouankiz, Melar a oa ken devot ha ker fur ma lavare an dud

e oa ar mab patroum he dad, rak bez' en devoa ar memez dremm. ar memez vertuziou gantan. Doue, trugarezuz atao e kenver an dud reuzeudik, a skuillaz he vennoz var ar minor mac'haniet, rak Melar o veza bet lakeat d'ezan eun troad arem hag eun dourn aré'hant, a e'helle, dre vuzud, en em zervicha anezo koulz hag euz he zourn hag he droad all; kreski a reant dre ma kreske he oll izili all. Ar burzud-man ne reaz nemet kreski doujans ha karantez ar bobl en he genver.

P'en devoue Melar tremenet e'houec'h vloaz er gouent, e oue roet d'eun dijentil hanvet Kerialtanus da beurgelemm: heman a dlie deski d'ar prins iaouank ambrega an armou evit beza gwest da ren ar rouantelez divezetoc'h. Rivod, savet aoun gantan, a e'halvaz Kerialtanus, hag a e'houlemmaz digantan laza Melar. « Mar ki- » rit sentin ouzin, eme Rivod, o pezo a leve ar vro oll a » e'helloc'h da velet divar huella menez a zo var douar » Kerne. — Great eo, eme Kerialtanus, evelato, red eo » d'in kaout ali va fried. » Hag ez eaz da gaout he e'hreg; houman a ziskleriaz: « Eun tad na lez morse re a beadra » gant he vugale. » Var gement-se, an dijentil a gemeraz he vab hena Justan, hag a zistroaz d'en em glevet evit mad gant Rivod: choum a reaz eiz dez d'ober he dro.

Ar e'hreg, tennereat he e'haloun o velet peger chentil e oa Melar, e devoue keuz d'an ali kriz e doa roet d'he fried. Tec'het a reaz gant ar prins iaouank da di kount an Domnonee, a oa neuze o choum en eur e'hastell krenv, e Lanneur. « Eno, emezi, ar paotr a vezo e savete, rak » greg ar e'hout a zo e'hoar da dad Melar. » Hag hi ha mont di gantan, heb diskleria da zen ar zonz fallakr a oa e spered he fried.

Kerialtanus, kerkent ha ma oue distro d'ar gear, a redaz gant he vab varlerc'h Melar: her e'haout a rejont e Lanneur. Ar prins iaouank, leun a fizians e Kerialtanus, a ziskouezaz karantez d'ezhan, hag en noz varlerc'h, an daou Judas, tad ha mab, a drouc'haz he benn d'ezhan epad he gousk, var dro ar bloaz 544, d'an 2 a viz here.

Doue ne zaleaz ket da skei he vuntrerien: Justan a dorraz he e'houzoug en eur lemmel kuit dre ar prenestr,

Kerialtanus, o veza savet var eur menez da velet ar vro roet d'ezan evit priz ar goad, a deuaz da veza dall, hag a varvaz eno heb kaout den d'he zikour. Rivod he-unan a gollaz he skiant vad, hag a varvaz dindan tri devez e kreiz poaniou skrijuz.

Ar zant pe an eal-man a zo henoret e Breiz-Izel e parrezioù Loe-Melar, Meilar, Sant-Meloire, Sant-Briek, ha dreist oll e Lanneur: kredi a rear eo bet lazec'ho e maner ar Beuzit, hag eo bet enterret eno da genta; he gorf santel a zo bet kaset da e'houde d'an iliz parrez, eno e veler atao he vez, hag e e'honorer eun nebeud euz he relegou.

SONJOMP ERVAD :

Guelet e reomp e huez ar zant-man, pe seurt torfejou mantruz a e'hell an den ober dre he ourgouil. Rivod, dallet gant ar e'hoant d'en em zevel, a lazaz he vreur hag he niz, met Doue ne lezaz ket anezan pell var eun tron ruziet gant goad daou verzer.

Sant Melar, o veza kollet an esperanz da bignat var an tron, a zavaz he spered etrezek rouantelez an envou; ar zonz da gaout eur gurunen er baradoz a reaz d'ezan distrei he spered diouz plijadurezioù ha madou dister ar bed-man. Anaout a rea mad komzou fur an Aviel: « Petra dal d'eoc'h » gounit ar bed oll, mar kollit hoc'h ene? »

Tud iaouank, grit evel sant Melar; roit abred ho kaloun da Zoue, grit fae var madou ha plijadurezioù ar bed, evit klask madou guelloc'h an ene, hag eürusdet padusoc'h ar baradoz.



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Tanguy ha Santez Heaudez. Breur ha C'hoar

En amzer sant Paol a Leon, eun dijentil hanvet Galon a veve e kastell Tremazan, e Landunvez, gant he zaou grouadur, Gurguy hag Heaudez. Intany abred, an dijentil a zimezaz d'eun dimezell euz a Vro-Zaoz, hag houman a oue fall evit he lez-vugale, savet mad gant ho mam, itroun a feiz hag a benn.

Gurguy a iez da Baris, da lez ar roue, evit deski ambrega an armou. Heaudez a joumaz e Tremazan, hag a oue merzeriet gant he lez-vam, a rea d'ezi mont da voalc'hi d'ar poull ha skaota an traou er gegin. An tad, re laosk en he zever, na zifennaz ket he vere'h. Ar plac'h iaouank ne glemme ket, senti a rea; diesa ma kave eo abalamour ma veze miret outi mont da zelaou an oferen var ar pemdez. Eun all e leac'h plega, e dije enebet; eun all e dije da viana klasket dimezi evit tec'het euz ar gear; Heaudez e doa kemeret Jesus da bried: miret a reaz ar ger e doa roet d'ezan.

Ar plac'h iaouank a roe an aluzen d'ar beorien, ar muia ma c'helle, met he lez-vam a vire outi, gourdrouz a rea anezi heb ehan, eun devez zoken e skoaz ganti. O veza m'oa Heaudez koant evel an deiz, ha ne resevet kelou ebet euz he breur Gurguy, meur a zijentil iaouank a zeue aliez da Dremazan, ha ne deo souez: Heaudez e doa furnez, danvez ha gened; an tad ho digemere mad, rak karet a rea he vere'h, met al lez-vam, dre gasouni, a gasaz anezi en eun tiegez var ar mez.

Eun devez, Gurguy a zeuaz d'ar gear, heb diskleria he hano da zen. He lez-vam ne anavezaz ket anezan, ha pa c'houlennaz divar benn Heaudez, an teod fall a zuaz ar plac'h iaouank dre voarizi : dioc'h ma lavare, ar

vere'h-se ne doa mui netra da goll. Ar mare'hek iaouank a gredaz var an heur; drouk emman ez eaz varzu ar verouri, hag e kavaz he c'hoar o voalc'hi an dillad. Ober a reaz dioc'htu he hano anezi, met hi, nec'het o velet eun dijentil ha ne anaveze ket o c'her'vel anezi dre he hano, a grogaz aon emni, hag a zavaz prim evit tec'het en ti. Gurguy a zonzaz: « Lavarou va lez-vam a zo guir » rion, va c'hoar e deuz aon rason abalamour m'e deuz » kollet he honor », hag hen ha mont a lam var he lere'h, ha dibenna anezi gant eun taol kleze.

Goude he dorfet, Gurguy a c'houlennaz digant tud an tiegez petra oa buez Heaudez, met ar re-man ne rejont nemet meuli anezi, biskoaz plac'h iaouank ne oa bet devotoc'h, guelloc'h evit ar beorien, modestoc'h ha purroc'h en he buez. Rannet he galoun, an den iaouank a iez da anzaio he c'hlae'har d'he dad, ha setu Heaudez he-unan o tont er maner, he fenn ganti en he daouarn.

Lakât a reaz eno he fenn var he gouzoug; rebech a reaz neuze he fallagriez d'he lez-vam, diskleria a reaz d'he breur e oa pardoumet gant Doue, var he feden d'ezi, hag e tremenaz, goude beza resevet he zakramanchou digant beleg ar maner. Al lez-vam a oa maro en he raok, skoet gant dourn Doue.

Gurguy, chenchet evel eun all en he blas, a iez da gaout sant Paol, koves a reaz he bec'hed gant eur guir geuz, hag ober a reaz eur binijen galet, epad daou-ugent devez, er c'hoat a zo etre Brest ha Landerne, hag hanvet abalamour da-ze koat Tanguy.

Achu he binijen gantan, e tistroaz da gaout sant Paol; ar zant a velaz eur voul tan azioe'h penn an den iaouank, tan hag a verke ar garantez beo a oa en he galoun evit Doue, hag a lavaraz: « Hiviziken, ne viot mui hanvet » Gurguy, met Tan-guy. »

Tanguy a oue resevet, var he c'houlenn, etouez menez'he sant Paol en enez Vaz, ac'hano e oue kaset gant eun nebeut Breudeur da zével eur gouent er Releek-Plouneour; choum a reaz eno eun nebeut bloaveziou. He dad o veza koezet goall glanv, Tanguy a iez d'he zikour da ober eur maro santel.

En amzer-ze, Arvoriz euz bro Leon o veza eat da ober kemverz en Ejipt, a zistroaz eur vech gant relegou sant Vaze, abostol, hag ar relegou santel a zouaraz dre vuzud er beg douar a zo etre Konk-Leon ha Brest.

Sant Tanguy, mestr, goude maro he dad, euz an douarou-ze hag euz ar c'harter tro-var-dro, a zavaz eno eur gouent vraz pe manac'hti, hag a oue an Abad kenta euz Lok-Maze penn ar bed.

Mervel a reaz er Releek er bloaz 594, met he gorf a oue kaset da Lok-Maze: he c'houel a zo bet great atao gant devosion, en iliz Cathedral Kastell, betek ar bloaz 1793.

SONJOMP ERVAD :

Dioualomp rak an teodou fall, rak eun ampoezoun int, gwest da zua ar guella tud, dre voarizi.

Ha mar tigouez ganeomp koueza en eur pec'hed benag, raparomp, evel sant Tanguy, dre hor pinijen; Doue, neuze, a bardouno d'eomp.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Edouard, Roue Bro-Zaoz

(1004-1060)

Sant Edouard a zeuz er bed, er bloaz 1004: Ethelred, he dad a oa roue Bro Zaoz. Brezel spontuz a oa neuze etre Bro-Zaoz hag an Danemark.

En aom na vije bet lazeta mabik Edouard, a kreiz ar freuz, he vam, ar brinsez Emma, a zeuz gantan e Frans. Duk an Normandi hag a oa breur d'ezi, he digemeraz en he di, hi hag he mab. Edouard a joumaz eno, epad pemp bloaz ha tregont.

Buez an den iaouank, epad an oll amzer-ze, a oue eur

vuez pur ha santel. Skrija a rea, bevech ma kleve eur gomz vil benag, ha guelloc'h e vije bet gantan mervel, eget ober an distera tra kountrol d'ar burete.

Braz e oa ive he garantez evit he nesa. N'eo ket hen en divije klasket ober diez da zen. Eun devez e oue lavaret d'ezan e vije dizale e Bro-Zaoz eur brezel braz hag e vije skuillet kalz a c'hoad evit he lakât var dron he dad. Edouard a respountaz var eun e vije guelloc'h gantan dioneret ar gurunen a roue, eget gullet he zujidi e riskl da goll ho buez evitan.

An dud kriz ha fallakr o doa great ho mistri var ar vro a varvas an eil varlerc'h egile, ha kerkent ar Zaozon, anezho ho-unan, a ginnigaz da Edouard ar gurunen a roue.

En esper ober vad d'ezo, Edouard a zistroaz da Vro-Zaoz, ha dioc'htu goude beza bet sakret roue, en iliz Westminster, e stagaz d'al labour.

Epad ar pemp bloaz ha tregont ma oa bet Bro Zaoz etre ho daouarn, an Danemarkiz o doa great enni eur freuz spontuz. An dud-se, gouez ha difeiz, n'o doa respetet na sakr na dizakr; en ho c'hasouni ouz ar relijion gristen, o doa lakeat an tan en ilizou hag er c'houentchou. An eskibien hag ar veleien a oa bet, lod anezo, lazeta ganto, lod all, kaset er meaz euz ar vro.

Kenta a reaz ar roue Edouard, a oue sevel ilizou ha kouenchou nevez, ha pedi ar veleien hag an eskibien da zistrei, pep hini anezo, d'he barrez ha d'he eskopti. P'en devoue rentet d'ar relijion gristen he renk er vro, da lavaret eo, ar renk a honor, ar roue Edouard a reaz lezennou all leun a furnez, evit startât ar peoc'h hag an unani etre he oll zujidi.

Ma oa bet karantezuz ha truezuz ouz he nesa, en he amzer genta, eur vech pignet var an tron e oue c'hoaz karantezusoc'h ha truezusoc'h ouz kement hini a vele en dienez: lezhanvet e oue Tad ar beorien, abalamour d'an aluzennou braz a rea.

Devosion ar zant na rea nemet kreski gant an amzer. He blijadur a oa beza dirak Sakramant an Aoter, o pedi, ha meur a vech, evit kreski c'hoaz he zevosion, Jesus en

em ziskouezaz d'ezan, e giz m'edo guechall var an douar. Goude Jesus, he garantez vrasa a oa evit an Itroun Varia, he vam euz an Env.

Sant Edouard a reaz joa hag eürusdet he zujidi, tost da dregont vloaz. Erfin, o velet e tostea he heur ziveza, e choazaz an hini a dlie beza roue Bro-Zaoz, var he lere'h, hag e rentaz e peoc'h he ene pur da Zoue, er' bloaz 1060, pa oa o ren he c'houec'h vloaz hag hanter-kant.

SONJOMP ERVAD :

Guelet o peuz ar freuz a reaz an Danemarkiz, e Bro-Zaoz, epad an tregont vloaz ma oant ar vistri er vro. Kement a zigase sonj euz Doue hag euz ar relijion gristen a oa bet diskaret ganto. Er c'hountrol, e nebeut amzer, sant Edouard, var bouez poania, a lakeaz an urz vad e peb leac'h hag ar relijion gristen da ren adarre er vro. Dioc'h an dra-ze e c'hellit entent, eur vech muioc'h, an drouk pe ar vad a ra ar re a zo e penn gouarnamant eur vro, dioc'h ma 'z int kristen pe zigristen, mad pe fall. Abalamour da-ze, goazed, o pije pec'hed braz, deiz ar votadek, ma rojac'h ho mouez da zavel er c'hargou, da dud difeiz, da enebourien Doue hag an Iliz.



AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Kallixt, Pab ha Merzer



Ar zant-man a oa ganet e Roum. An oll gristenien a rea he veleudi abalamour d'he vouiziegez, d'he vertuziou ha d'ar boan a gemere da zavetei an eneoù. Rak-se pa oue lakeat ar Pab sant Zephyrin d'ar maro, Kallixt a oue choazet da ren an Iliz var he lere'h.

Ar gristenien a oue laosket e peoc'h pa varvaz an impalaer Septim Sever, hag ar Pab nevez na gollaz ket he amzer. Evesât a reaz ouz peb tra, o lakât urz vad e peb leac'h. Ober a reaz kement a oa en he c'halloud evit startât feiz ha devosion ar gristenien fidel, ha gounit ar baianed d'ar guir Doue. Lakât a reaz sevel ilizou nevez, ha kreski ar guerejou ; abaoue e vez roet an hano a vered sant Kallixt da vrasa hini a zo e Roum : pevarzek hag eiz ugent mil merzer a zo bet enterret enni.

Ar Pab santel-man a zougaz ive lezen an daouzek

deiziou evit trugarekât an Aotrou Doue euz ar grason hag an donezonou a ro d'eomp e peb amzer euz ar bloaz.

Met an Iliz ne oue ket lezet pell amzer e peoc'h. Eun deiz, ar gurun o veza kouezet var unan euz templou an doueou faoz e Roum, ar baianed a damallaz ar gristenien da veza tennet varno an darvoud-se dre ho sorserez.

Great e oue raktal goall vuez d'ezo adarre, klasket e ouent evit beza lakeat d'ar maro. Hogen, eur paian a renk huel, hanvet Palmaz, en em gavaz eun deiz da vont en eun ti var ar meaz; en ti-ze e oa ar Pab Kallixt, gant eur maread kristenien, o kana kantikou da Zoue. Palmaz a ieaz d'ho diskuill, hag a zistroaz dioc'htu gant archerien da glask Kallixt evit he gas d'ar prizoun.

Epad ma tremenent dirak eun aoter paian a ginniget varman eur sakrifis d'ar falz doue Merkur, e oue klevet eur plac'h iaouank a oa e servich an diaoul o krial a bouez penn: « Doue Kallixt eo ar guir, Doue, kastiza a » raio ar baianed dizagr na fell ket d'ezo hen adori. » Palmaz a reaz kerKent eur skrijaden a spount, he spered a zigoraz da sklerijen ar feiz, hag e leac'h guerza ar Pab, ez eaz d'he gaout dre guz, da c'houlen beza badezet. Ar zant a roaz d'ar beleg Kallepod ar garg da ober katekiz da Balmaz, d'he c'hreg, da oll dud he di, daou ha daou-ugent anezo; da c'houde, ar Pab ho badezaz.

Da zeiz he vadiziant, Palmaz a bareaz gant sin ar groaz eur plac'h euz ti ar senatour Semplis; o velet ar burzud-se, Semplis hag he oll zervicherien, trivac'h ha tri-ugent anezo, a c'houlennaz beza badezet. Sant Kallixt a roaz d'ezo ar gelemadurez kristen, hag ho badezaz goudeze.

Gouarner kear, o veza bet kelou a gement-se, a roaz urz d'he archerien d'ho lakât oll d'ar maro: ar beleg Kallepod hag an oll gristenien nevez-man a oue dibennet er nemez devez. Met ar gouarner n'en devoa ket skuillet e'hoaz aoualc'h a c'hoad kristen, p'eo guir n'en doa ket lazet an Tad Santel ar Pab, rak sant Kallixt a oa anavezet evit brasa enebour an doueou faoz. Great e oue eta eun enklask piz anezan, ar Pab Santel a oue paket, hag ar baianed he gargaz a chadennou hag he daolaz er pri-

zoun. Eno e oue great d'ezan gouzanv bep seurt poaniou: skourjezet e veze bep mintin, hag epad pevar dervez e oue lezet heb tam. Met Doue na zilezaz ket an hini a oa he vikel var an douar, ober a reaz d'ezhan para eun archer hanvet Privat, hag he c'hounit d'ar feiz. Ar burzud-se a reaz d'ar vourrevien egari: lakât a rejont Privat d'ar maro; staga a rejont da c'houde eur mean ouz gouzoug ar Pab Santel, hag e stlapjont anezan en eur puns, o taoler mein hag atred varnan ken a oue stanket ar puns. Evelse e varvaz sant Kallixt, pab ha merzer, er bloaz 222, goude beza gouarnet an Iliz epad pemp bloaz, eur miz ha daouzek devez.

SONJOMP ERVAD :

Pa deu eun den da rei eun dra benag, pe da renta servich d'eoc'h, an disterra tra a rit eo trugarekât ho madoberour; ha m'o peuz ankounac'heat hen ober, e kavit diez goude, hag hoc'h euz mez.

Doue ne ehan da rei d'eoc'h bemdez donezonou ha grason: daoust ha var evez emaoch-hu da lavaret bennoz d'ezan evit he vadoberou?

M'o deuz an oll displijadur o velet eun den digar, Doue ken nebeut n'en deuz ket a joa ouz ar seurt tud-se: skuiza a ra, evel an dud, oc'h ober vad d'ezo.

Tri rum dud dizanaoudek a zo: ar re a ankounac'ha ar vad a zo bet great d'ezo; ar re a rent an drouk evit ar mad; ar re a ra implij euz an donezonou o deuz bet evit ober drouk d'ho madoberour.

Ped den, siouaz! a laka ho madou, ho c'horf, ho spered da offansi Doue, en deuz roet d'ezo kement-se oll. Pegen digaloun int!



AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Santez Thereza, Guerc'hez

(1515-1582)

Thereza a oa ginnidik euz kear Avila, er Spagn. He zad hag he mam a oa tud a zoujans Doue, hag a felle d'ezo ober kristenien vad euz ho bugale. En eur skol ker santel, Thereza a zeskaz abred karet Doue hag ar Vere'hez. Kerkent ha ma ouezaz lenn, he fijadur a oa, emezi, en em denna a gostez gant unan euz he breudeur, evit lenn leor Buez ar Zent.

D'an oad a zaouzek vloaz, e kollaz he mam. Neuze Thereza a bedaz ar Vere'hez Gloriuz Vari da veza he mam. Nebeut goude, heb sonjal hirroc'h, Thereza en em lakeaz da lenn leoriou hanter-vad, hanter-fall, ha da zaremperd eur giniterv d'ezi hag a oa eur penn skanv. E kement-se ne reaz biskoaz pec'hed braz ebed, met e riskl e oa d'en em goll, ha da goueza, nebeut ha nebeut, e lasou an drouk-spered. A drugare Doue, he zad a velaz e oa riskl eviti, ha setu hen, evit troue'ha berr an drouk, ha kas anezi d'ar skol en eur gouent leanezed euz a Urz sant Aogustin.

Eno, gant kenteliou mad al leanezed, e taolaz pell diouti kement a zisplije d'an Aotrou Doue. Ar pezh a reaz c'hoaz eur vad dreist d'ezi, eo leoriou sant Jerom, a oa bet roet d'ezi da lenn gant unan euz he eontred. Divar neuze, he choaz a oue great: eun devez e tiskleriaz d'he zad e doa c'hoant en em rei oll da Zoue, ha mont da leanez, n'eo ket er gouent ma oa bet er skol enni, met e kouent Urz Karmez.

He zad a gare kalz anezi, ha guelloc'h e vije bet gantan, gaelet he vere'h o choum er gear da harpa he gozni. Lavaret a reaz evelato: « Bolontez Doue bezet great. »

Epad kalz bloaveziou, Thereza a oue eul leanez santel, mad da viret reolen he Urz, met, pa oue 40 vloaz, Jesus a ziskleriaz d'ezhi: « Bez' e vezi d'in, ha d'in hebken. »

Divar neuze, nag a binijennou a reaz! D'ar mare-ze, a kalz broiou euz an Europ, an dud a zileze ar relijion gatholik hag ar guir feiz, evit heuil falz kredennou Luther, tad ar Brotestanted. Ar zonzj euz an eneou keiz en em daole a galoun vad var hent an ifern, a rea d'ar zantez krena euz he oll izili: « Oh! na me garfe, a lavare-hi, sa- » vetei an dud-se! Va buez a rofen laouen-braz, evit miret » outo da vont da goll! » Evit-se, en esper obten digant Doue distro ar bec'herien, distro an heretiked da feiz ho badiziant, Thereza a iune kasi bemdez, hag a dremene al loden vrasa euz an noz o pedi. Gant an dra-ze, ee'h en em skourjeze, guech gant linard, guech gant bodou drez pe spern. Dindan he dillad all, e touge eur c'houriz houarn begou lem enghan, hag a zanke en he c'horf paour!

Ger a zantez-man a oa: Aut pati, aut mori; pe c'houzanv, pe vervel; da lavaret eo, na falveze ket d'ezi beva heb gouzanv eur boan benag evit an Aotrou Doue. Lavaret a reer e deuz ar zantez, dre nerz he fedennou hag he finijennou, gounezet da Zoue kement a oneou ha sant Fransez Xavier dre he labourou braz er broiou pell.

Leanezed Urz Karmez o doa soupleat ho finijennou, eun tachad a oa, met Thereza a reaz pinijen evel a-goz, hag a c'houlemmaz digant he C'hoarezed ober evel di.

Mouez santez Thereza a oue selaouet. Leanezed Urz Karmez a zeuaz da veza muioc'h douget, c'hoaz, d'ar beden, d'ar binijen ha d'an oll oberou a zevosion. Guelloc'h so, e leac'h bihanat, niver al leanezed a greskaz kement ma oue red sevel, e berr amzer, ouspenn tregont kouent nevez.

Ar venec'h euz Urz Karmez a gemeraz ive skouer diouz santez Thereza, hag a renaz var he ali eur vuez strisoc'h ha parfetoc'h c'hoaz. Thereza e devoue kalz nec'hamant var he spered, meur a vech; kalz tud a enebaz outi; met treac'h e oue, gant an amzer. Doue a zigollaz ar zantez euz he foaniou oc'h ober d'ezi gaelet meur a dro, ar Mabik Jesus.

Dinerzet gant he labourou braz, Thereza a gouezaz klanv, e kouent Alb. Kerkent ha ma velaz, en he c'hampr, ar beleg, an hosti zakr gantan, evit he c'homunia, Thereza a lavaraz a vouez huel ha gant eur garantez birvidik: « Deuit, o va Zalver; deuit, pried santel » va ene; deut eo erfin an heur evidoun da vont euz ar » bed-man! » Hag en eur zellet ouz ar grusifi a veze atao en he dourn, e rentaz he ene da Zoue, er bloaz 1582.

Pa varvaz, santez Thereza a oa o ren he zeiz vloaz ha tri-ugent.

SONJOMP ERVAD :

A drugare Doue, tad santez Thereza a velaz abred aoualc'h, e lenne he verc'h leoriou skanv eun tamik, hag e taremprede eur giniterv d'ezhi hag a c'helle noazout d'he ene.

Tadou ha mamou, na lezit ket ho pugale da lenn leoriou pe gazetennou hag a c'helfe sila en ho c'haloun sonjou koutrol d'ar feiz pe d'ar burete. Na laoskit ket ken nebeut ho pugale, da zarempred tud, skanv ho fenn; nebeutoc'h c'hoaz tud a skouer fall, rak an hini a ia da heul tud fall a zeuio, e herr amzer, da veza ker fall hag hint-hi.

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Konogan, Eskop Kemper

Konogan, da lavaret eo « guen kann », a oa ganet e maner ar Palud e kichen Landerne, a dud a ouen huel. Savet e oüe e doujans Doue, hag e tiskonezaz beza eur bugel a vennoz, digor he spered da genteliou an dud, ha troet he galoun varzu ar furnez hag ar zantelez.

Kaset e oue abred da Gemper, d'ar skol savet gant ar roue Gralon, hag eno e teuz da veza habil var skianchou ar bed ha var ar skianchou sakr. He gerent a oa lore'h

enno gant eur mab, ken dispar, hag a gasaz anezan da vanner Gaiomar, kount Leon. Konogan a ieaz di evit senti outo; met eno, koulz hag er gear, e oue atao da Zoue. Choum a reaz goulskoude er bed epad pemp bloaz gant aoun da ober displijadur d'he dud, met neuze e tistroaz d'ar gear da c'houlou digant he dad aotre d'en em rei oll da zervich Doue; var bouez pedi aliez, e oue lezet da heuill ioul he galoun.

Kerkent ar zant a ieaz en eur gouent evit en em lakât e stad da reseo ervad an Ursiou sakr. Pa oue beleget, e tistroaz d'ar Palud, hag e savaz eno eur chapel gaer. Goude maro he vam, ar zant en em dennaz en eur c'horn euz ar c'hoat, da ober pinijen ha da zantelât he ene, met dizale e oue anavezet he zantelez, hag eun niver braz a dud a zirede d'he velet ha da c'houlou beza renet gantan varzu ar baradoz. Red e oue eta d'ezan sevel evito eur gouent hanvet abaoe « kouent Beuzit Konogan. ».

Eno an den santel n'en devoa ehan ebet o rei sklerijen d'ar bobl a zirede d'he gaout. Na c'helle ket pedi Doue kement ha m'en dije karet, hag e c'hoanteaz tec'het kuit. Mont a reaz eta da abati Landevennek da velet Sant Guennole. Rei a reaz d'ezan douar Lanloezok e kichen chapel santez Perronnel e Plouzeniel, gant he oll vadou all, ha lakât a reaz kouent ar Beuzit dindan gouarn abad Landevennek. Sant Guennole a reaz d'ezan choum gantan en abati epad eur pennad amzer hag eno ar zant a oue evit an oll eur skouer a zevosion hag a zantelez. Da c'houde, sant Guennole her c'hasaz adarre e penn he gouent er Veuzit; senti a reaz a greiz kaloun.

Pa deuz sant Korantin da vervel, e oue goure'hemmet pedennou evit anaout piou a vije ar guella da lakât en he blas. A benn tri devez an oll dud a iliz a roaz ho mouez da zant Konogan, ha kerkent e oue sakret eskop Kemper.

An eskop santel a boanias da vale var roudou sant Korantin: labourat a reaz, heb damanti, evit silvidigez an eneo, ha Doue a skuillaz he vennoz var he labour. Guelet a reaz kalz a dud o tistrei d'ar relijion gristen. hag ar feiz o startât etouez tud fidel eskopti Kemper.

Goude beza renet he bobl epad kalz a vloaveziou, ar zant, leun a veritou, a iez da reseo he gurunen en env. An darn vrasa euz a relegou sant Konogan a zo e Montreuil, en tu all da Rouen.

Sant Alar eo a oue eskop Kemper, varlere'h sant Konogan. An daou zant-man a oa henoret meurbet, guechall goz, en eskopti Leon koulz hag en eskopti Kemper.

SONJOMP ERVAD :

Eun dra vad eo pedi hag henori ar zent oll, rak oll int mignoned da Zoue: muioc'h a zevosion a dleomp kaout evelato d'ar zent o deus bevet var douar Breiz-Izel, hag o deuz labourer da skuill sklerijen ar feiz en hor bro, azezet guechall e tenvalijen ar maro. Sant Korantin, sant Guenole, sant Konogan, sant Alar, sant Paol, sant Goulven, sant Thevenan ha kalz a re all: setu eno hon tadou er feiz, hon ebestel. Bezomp sonj da bedi anezo gant fizians: bez' ez int hor patrouned hag hon difennourien dirak Doue.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Santez Mac'harit-Mari Alakok

(1647-1690)

Mac'harit-Mari Alakok eo al leanez a zo bet karget gant Jesus he-unan da ziskleria d'an dud an devosion d'he Galoun-Zakr: guelet e deuz Kaloun Adorabl Hor Zalver 77 guez. Ganet er bloaz 1647, en eskopti Autun, Mac'harit-Mari a oue devot braz en he bugaleach. E leac'h dimezi ha chom er bed, e kavaz guelloc'h senti ouz mouez an Aotrou Doue, ha mont e kouent ar Visitation e Paray-ar-Monial. Hanvet e oue, heb dale, da eil superioez er gouent.

Evel ma lavar d'comp ar c'hatekiz, Jesus-Christ en

deuz savet Sakramant an Aoter, evit chom ganeomp en tabernakl ha servichout da vagadurez d'hon eneo. Ma! d'an ampoent-se e oa daou rum heretiked hag a rea, dre ho c'henteliou fall, kalz drouk d'an eneo: ar brotestanted hag ar jansenisted.

Ar brotestanted a lavare: « N'ema ket Jesus e Sakramant an Aoter, n'ema ket en hosti zakr, gant he gorf, » he c'hoad hag he zivinite. »

Euz ho zu, ar jansenisted a vire ouz ar gristenien vella da vont da gommunia, var zigarez ne c'hell ket an den beza parfet aouale'h evit reseo an Aotrou Doue.

Evit difazia, var eun dro, ar brotestanted hag ar jansenisted, evit merka sklear d'an oll ne oa ket ar virionez ganto, Jesus en em ziskouezaz, meur a vech, da Vac'harit-Mari, epad ma oa daoulinet dirak an tabernakl, dirak ar Zakramant, e chapel kouent Paray-ar-Monial.

Eun devez, dreist-oll, ma pede a vir galoun he Zalver benniget, Jesus en em ziskouezaz dirazi, e kreiz eur sklerijen gaer. He bemp gouli a lugerne evel pemp heol skeduz. Evel flammou tan a zilamme euz he izili; poull he Galoun a oa henvel ouz eur fourn c'horet. Neuze, o tiskouez he Galoun Zakr entanet oll, Jesus a lavaraz da Vac'harit-Mari: « Setu, emezan, ar Galoun e deuz ka- » ret kement an dud, hag a zo karet ken nebeut ganto. » N'em euz, e Sakramant an Aoter, aberz an dud, nemed » ienien, disprijans ha dismegans. »

Gant an dra-ze, Jesus a c'houlemmaz tri zra digant ar zantez. Da genta, ma vije great, d'ar guener kenta goude eizved ar Zakramant, eur gouel en honor d'he Galoun-Zakr, hag e vije, en devez-se, goulennet pardon euz an dismegans great d'ezan, e Sakramant an Aoter.

D'an eil, Jesus a c'houlemmaz e vije great taolennou hag imachou euz he Galoun-Zakr. « Ar guel anezo, ene » Jesus, a lakaio kalz a bec'herien da dec'het divar » hent an ifern. »

D'an trede, Jesus a c'houlemmaz ma teuje ar gristenien da gommunia, bep guener kenta euz ar miz, ha da ober muia ma c'helfent, eun heur a adorasion dirak ar Zakramant, da genver an devez-se.

Mac'harit-Mari a ziskleriaz, en dro d'ezi, ar pezh e doa gullet ha klevet. Guir eo, lod a reaz goap anezi, met nebeut ha nebeut an devoision da Galoun-Zakr Jesus a oue anavezet, en he amzer zoken.

Mac'harit-Mari a varvaz, d'ar zeitek a viz here, er bloaz 1690, d'an oad a bevar bloaz ha daou-ugent; diskleriet eo bet santez gant ar Pab Beneat XV, er bloaz 1920.

Eun nebeut bloaveziou a zo, ar Pab Leon XIII hag ar Pab Pi X o deuz great kement a oa en ho galloud, evit lakât ar gristenien da garet ha da bedi Kaloun-Zakr Jesus. Hirio an deiz, ar Pab Pi XI a laka he oll fizians er Galoun-Zakr, hag a zoug an oll dud fidel da zeveni kement a zo bet goulnnet digant ar zantez Mac'harit-Mari.

SONJOMP ERVAD :

Jesus, hervez ar Brotestanted, n'ema ket e guirionez e Sakramant an Aoter. Eo: oc'h en em ziskouez evel m'en deuz great, da zantez Mac'harit-Mari daoulinet dirak Aoter ar Zakramant, Jesus en deuz merket sklear ema o choum en tabernakl, en hosti zakr, gant ar c'horf m'en doa guechall var an douar ha m'en deuz brema en env. En amzer-man c'hoaz, e Lourd, dre ar miraklou braz a ra, epad prosesion ar Zakramant, Jesus a ziskouez ive, sklear aoualc'h, e ma en hosti zantel, gant he oll c'halloud hag he oll vadelez.

Ar Jansenisted a vire ouz an dud da vont da gommunia; Jesus en deuz diskleriet da Vac'harit-Mari, n'en doa ken c'hoant nemet en em rei da bephini ac'hanomp dre ar gommunion. Deomp eta da gommunia aliesha ma c'hellimp, dreist-oll, d'ar guener kenta euz ar miz, rak setu ar bromesa en deuz great Jesus da Vac'harit-Mari: « D'ar re a gommunion, » emezan, nao miz dioc'htu, d'ar guener kenta, e promettan » gras ar binijen, hag ar zakramanchou var ho zremenvan. »

An Tad santel ar Pab Pie X, sklerijennet gant ar Spered Santel, en deuz diskleriet freaz, er bloaz 1905: « Ar c'hristen » a c'hello tostât ouz ar gommunion zantel, gant m'en dezo eun intansion eün, ha ma vezo neat he ene euz ar pec'hed marvel. »



AN TRIVAC'HVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Lukas, Avieler



Sant Lukas a zo ganet e kear Antioch. En he amzer genta e oa medisin. Bez' e c'houie ive liva brao, hag ober a reaz meur a boltred euz ar Vere'hez Vari: unan anezo a virer c'hoaz, hirio, e Roum, en iliz Itron-Varia Veur.

Eur vech gounezet d'ar feiz kristen, Lukas a heullaz an abostol braz sant Paul, hag a labouraz gantan da skigna relijion Jesus-Christ.

Evit ma vije Jesus, mab Doue, anavezet kentoc'h ha karet guelloe'h gant an dud, sant Lukas a skrivaz he Aviel, da lavaret eo, histor buez Jesus-Christ. El leor-ze, sant Lukas a zesk d'eomp, da genta, piou eo Jesus-Christ: « Mab Doue eo, emezan. Kemeret en deuz eur

c'horf hag eun ene, konsevet eo bet dre vertuz ar Spered-Santel, ganet eo bet gant ar Vere'hez Vari e kraouik Bethleem. An elez a ziskleriaz he c'hinivelez da bastored a oa o tiouall ho denved. Eiz dez goude, ar Mabik Jesus a oue sirkonsiset, ha daou-ugent devez varlere'h he c'hinivelez, e oue kaset da dempl Jerusalem gant an Itroun-Varia he vam. Pa oue badezet Jesus, e ster ar Jourden, gant sant Ian, an env a zigoraz, ar Spered-Santel, dindan furm eur goulm, a ziskennaz varnan, hag e oue klevet mouez Doue an Tad o lavaret: « Hema eo » va Mab muia-karet, ennan em euz lakeat va oll fli-jadur. »

Varlere'h kement-se, sant Lukas a skriv, en he Aviel, ar prezegennou hag ar miraklou great gant Jesus epad tri bloaz hanter, he Basion, he varo var ar groaz hag he resurreksion gloriuz, tri devez goude ma oa bet lakeat er bez.

En eul leor all, goude beza diskleriet e pignaz Jesus en env, daou-ugent devez goude he resurreksion hag e tiskennaz ar Spered-Santel var an ebstel, da zeiz ar Pantekost, sant Lukas a zispleg labourou kenta an ebstel, ho frezegennou dre ar bed, ar joa o devoue da c'hou-nit kalz eneou d'ar feiz kristen.

En eur ger, sant Lukas, en daou leor en deuz skrivet, a ziskouez d'eomp sklear eo deut Jesus, Mab Doue, var an douar evit savetei an dud, hag en deuz karget an Iliz da gendere'hel he labour a zilvidigez, betek fin ar bed. Sant Lukas en deuz merket kement a draou divar benn ginivelez ar Mabik Jesus, ma kreder eo bet kenteliet gant ar Vere'hez Vari, divar-benn an oll draou-ze; abalamour da-ze e vez hanvet avechou: Aviel Jesus-Christ krouadur.

Goude merzerenti an abostol sant Paol, Lukas a brezegaz ar feiz en Itali, en Dalmasii hag er Masedoan. En oll broiou-ze, ar zant en devoue poaniou a bep seurt da zivoaska a berz ar baianed; met dizamant d'he boan, ne glasse nemet savetei an eneou.

En Akai eo e varvaz er bloaz tri pe bevar ha pevar-ugent, dioc'h ma kreder.

KENTELIOU TENNET EUZ AVIEL SANT LUKAS

I. — Grit d'ar re all ar pez a garjac'h a ve great d'eoc'h hoc'h-unan.

II. — Ne varnit ket ar re all, ha ne viot ket barnet.

III. — N'ez euz netra kuzet a gement na vezo dizoloet.

IV. — Petra dal d'an den gounit ar bed oll, mar teu da goll he ene?

V. — Mab an den n'eo ket deut var an douar, evit koll an eneou, met evit ho zavetei.

VI. — Goulennit hag e vezo roet d'eoc'h, klaskit hag e kavoc'h, skoit var an or, hag e vezo digoret d'eoc'h.

VII. — Eüruz ar re a zelaou komzou Doue, hag a ren ho buez diouto.

SONJOMP ERVAD :

Sant Lukas en deuz skrivet Aviel Hor Zalver, evit ma vije anavezet gant an oll dud kenteliou Jesus-Christ. Hen, koulz hag an avielerien all, a zo bet sklerijennet gant ar Spered-Santel, ha diouallet euz a bep fazi; lennomp eta an Aviel aliez, ha lennomp anezan gant an oll respet a zo dleet. Eur merour hag a reseo eul lizer digant he vestr, a lenn anezan gant evez, poeza a ra ar geriou a zo ennan; an Aviel, ar Skritur-Zakr a zo liziri skrivet d'eomp gant an Aotrou Doue, hor mestr kenta, hor mestr huella; hag ho lenn a reomp-ni gant respet, gant evez? N'eo ket aoualc'h ho lenn, red eo miret ar c'henteliou a zo enno; hag hen ober a reomp-ni?

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Per a Alkantara

(1499-1562)

Ar zant-man, ginidik euz kear Alkantara, er Spagn, a oa mab eun den a lezen, brudet-braz dre he garantez evit ar beorien, hag he respet evit ar veleien hag ar

relijiuzed. He vam a oa ive eur gristenez euz ar re vella, hag a zilaz abred, e kaloun he mab, eur garantez tener evit ar Verc'hez.

Skoueriou mad he dad, kenteliou devot he vam a reaz euz Perik eun ealiek Doue. Pa oa e'hoaz krouadur, n'en em blijie nemet o pedi anezan, pe er gear pe en iliz. Guelet e veze bemdez, goude ar skol, o vont d'an iliz da adori an Aotrou Doue en he zakramant.

Abalamour m'en doa ho faotr spered, he dud a gavaz mad he gas da skol-veur kear Salamank. Er gear-man, Per ne vevaz ket evel kalz a baotred iaouank all, siouaz d'ezo! E leac'h redet varlere'h plijadureziou fall ar bed, p'en deveze eun nebeut amzer, evit en em ziskuiza euz ar studi, ez ea da di eur beleg benag, pe e'hoaz ez ea da velet ar re baour hag ar re glanv.

Abenn daou vloaz goude, echu gantan he studi, e skol-veur Salamank, Per a e'houlennaz mont en Urz sant Fransez. Divar neuze, e reaz pinijennou kalet meurbed. Iun a rea bemdez, hag aliez divar bara ha dour: dougen a rea reza-deiz, en dro d'he gorf, eur gouriz houarn. Na roe nemet eun heur hanter bemnos d'ar e'housskat, ha e'hoaz, ne e'hourveze ket, harpa a rea hebken he benn ouz ar voger. Tremen a rea al loden vrasa euz an noz o pedi Doue, hag o sonjal e traou an env. N'euz forz pe seurt amzer a rea, n'en em gleme ket: gouzanv a rea, a galoun vad, ar riou, an domder, ar glao, an ere'h. An amzer zoken a roe tro d'ezan da greski e'hoaz he binijennou: pa veze ar goan en he voasa e tigare prenestr ha dor he gambr, evit kaout muioc'h a riou. Na veze morse boutou ebet en he dreid, pa veze ere'h pe skourn var an douar: choum a rea atao diskabel, dindan ar glao puill, koulz ha dindan an heol bero.

Kement-se a binijennou a rentaz ar zant ker kastiz ma ne oa mui nemet an eskern hag ar e'hoc'h en anezan Arabad kredi e vije, evit-se, tenval he benn: ar e'houn-trol eo, laouen e veze bepred. Doue, dioc'h ma lavare, a garge he galoun a levenez hag a roe d'ezan, memez er bed-man, eun tanva euz joa ar baradoz.

Sant Per a Alkantara a oa rust outan he-unan, abala-

mour ma sonje gounit, dre he binijennou, eneou da Zoue. Abalamour da-ze e'hoaz, e prezege aliez d'ar bobl. hag he gomzou a iea betek ar beo er e'halonou. Nag a vad en deuz great, dre he brezegennou da dud he amzer! Ar be-e'herien vrasa, oc'h he glevet, a zileze ho buez a zizurz, ha lod anezo zoken a lavare kenavezo d'ar bed evit mont en eur gouent benag.

Dre he skoueriou ker santel, Per a Alkantara a zougaz relijiuzed he Urz da veza muioc'h e'hoaz da Zoue. Evel-dan, kalounekoc'h evit biskoaz, n'o doa ken e'hoant nemet labourat, poania ha gouzanv evit silvidigez ho nesa. En amzer sant Per a Alkantara, ha dre he aked, e oue savet nao gouent nevez euz he Urz.

Santez Thereza a veve d'ar mare-ze, hag a e'houlenne aliez kuzul diganthan. Sant Fransez Borjia en doa ive respet braz evitan, ha fizianz dreist ennan.

Erfin sant Per a Alkantara a glanvaz e kear Avila. Goude m'en devoue resevet he zakramanchou diveza, an Itroun-Varia en em ziskouezaz d'ezan, en eur sklerijen dudiuz: « Bez' o pezo, emezi, eur gurunen gaer er baradoz. » Neuze he galon o tridal gant ar joa, ar zant a lavaraz komzou ar prophet David: « Lætatus sum in his » quæ dicta sunt mihi, in domum Domini ibimus, plija- » dur a ra d'in klevet ez in da di an Aotrou Doue, » hag e rentaz he ene d'he Grouer, er bloaz 1562, pa oa gant he dri bloaz ha tri-ugent.

Nebeut goude he varo, sant Per a Alkantara en em ziskouezaz e kreiz eur sklerijen gaer da zantez Thereza, hag a lavaraz d'ez: « O pinijen eüruz, e deuz great d'in » kaout eur e'hloar ker braz ! »

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a gemere tro euz an amzer re ien pe re dom evit ober pinijen. Ni ive, e leac'h klem pa n'hon deuz ket an amzer a fell d'eomp, kinnigomp da Zoue ar boan a ra d'eomp kement-se. Ar boan-ze, gouzanvet a galoun vad, a raparo evit hor pec'hejou, a ziverro hor purkator, hag a raio d'eomp gounit suroc'h eur gurunen en env.

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ HERE

Sant Ian a Genti, Beleg (1403-1473)

Ar zant-man a zo ganet e Kenti, eur gearik vian euz ar Pologn, e tro ar bloaz 1403: he dad a oa he hano Stanislas; he vam, Anna. Ho daou e oant kristenien katholic; henvel a rejont ho mab, Ian, abalamour ma oa ganet d'ar pevar var 'n ugent a viz even, deiz ginivelez sant Ian Vadezour. Kerkent ha ma e'hellaz Ian lavaret eur gerik benag, e teskjont d'ezan ar pedennou: Hon Tad, pehini zo en env; Me o salud, Mari; Me gred e Doue; hag he greansou.

Da genta e oue lakeat Ian e skol ar barrez; ha, dre ma teske buan peb tra, e oue kaset da c'houde, gant he dud, da skolach vraz Krakovi. Eno Ian a zantaz e oa galvet gant Doue da veza beleg, setu perak e poaniaz da studia ar philosophi hag an theoloji.

D'he bevar bloaz var 'n ugent e oue beleget, ha ker braz e oa dija he vouiziegez hag he zeskadurez, ma oue hanvet dioc'htu da rejant e skolach vraz Krakovi. Er stad-man, Ian a Genti a glaskaz, araok peb tra, ober euz an dud iaouank a oa e skol gantan kristenien stard en ho feiz: evit-se, ne roe kentel ebet d'he skolaerien, nemet goude beza pedet kalz an Aotrou Doue d'he sklerijenna.

Ian en doa eun devosion vraz da Basion Hor Zalver Jesus-Christ, hag aliez e choume, dioc'h an noz, meur a heur da bedi dirak eur C'halvar savet e porz ar skolach. Bep er mare, e tremene zoken an noz oll er beden. Sonjal a rea neuze er poaniou braz en deuz dionasket Hor Zalver evidomp, hag ar zonz-se a rea d'ezhan skuill eur maread daelou.

Eskop Krakovi en doa kalz a istim evit Ian, rak gouzout a rea peger braz e oa he aked evit silvidigez an eneo. Setu hen eta oc'h henvel Ian da bersoun, e parrez Ilkusi. Ar persoun nevez ne espernaz netra evit tenna an dud fiziet ennan divar an hent fall, hag ho lakât var hent ar baradoz.

Goude beza renet he barrez gant furnez ha santelez, Ian a Genti a roaz he zilez, hag a c'houlemaiz digant an aotrou 'n eskop distrei d'ober skol da Grakovi: « Aon am euz da veza daonet, emezan, abalamour da bec'hejou lod euz va farresioniz. » Ar zant a rea pinijen goulskoude, rak dougen a reaz, hed he vuez, dillad gros ha dister hag ober a reaz vijel bemdez epad tregont vloaz.

Var he gozni, ar zant a ieaz da bardouna da Jerusalem evit kreski he zevosion. Prezeg a rea guirioneziou ar feiz d'an dud a gave var he hent. Prezeg a reaz zoken Aviel Jesus-Christ d'an Turked divadez. Erruet e Jerusalem, e pokaz d'an douar ruziet guechall gant goad Jesus; c'hoant en devije bet da vervel eno, met Doue na roaz ket d'ezan he c'houlen. Pa oue distro da Grakovi, an dud he zigemeraz gant ar brasa respet.

Goude beza bet e Jerusalem, Ian a ieaz peder guech, da Roum, atao var he droad, gant eur bisac'h var he gein, lakât a rea ennan eun nebeut traou evit he vevanz. En eur vont, er giz-se, da bardouna, Ian n'en doa ken c'hoant, evel ma lavare he-unan, nemet ober he burkator er bed-man. Pebez joa evitan pa c'helle, e Roum, daoulina dirak ar Pab, ha reseo he vennoz !

Erfin d'an oad a zek vloaz ha tri-ugent, goude beza resevet ar zakramanchou diveza, Ian a Genti a varvaz e Krakovi (1473).

Doue o veza diskleriet santelez he zervicher dre galz a viraklou, epad he vuez ha goude he varo, ar Pab Klemant XIII a lakeaz anezan var roll ar zent, er bloaz 1767.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, keit ha ma 'z eo bet persoun, en doa aoun na vije eat lod euz he barresioniz da goll: an aoun-ze a reaz d'ezan rei he zilez: hirio ive, ar veleien a zo e penn ar par-

resiou, na glaskont nemet tenna an dud fiziet enno divarhent an ifern, hag evit-se e rankont avechou gourdrrouz ha skandalat.

Lod euz an dud a zo mad da gaout abeg er prezegennou a ra d'ezo ho beleien: « Re striz eo an urz ganto »; emezo. Bezit sur, kristenien, euz an dra-man: er gador-goves koulz hag er gador brezeg, ho peleien ne lavaront nemet ar pezh a gavont ar guella evit ho lakât oll var an hent a gas d'ar baradoz.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Santez Ursula hag he c'hompagnunez MERZEREZED

Er bloaz 451, Attila, roue ar pobladoù tud gouez ha kriz, hanvet Hunned, a oa bet trec'het e kichen kear Chalons gant Aetius, jeneral ar Romaned. An emgann a oue spontuz; Attila en doa dindannan pemp kant mil soudard heb feiz na reiz, hag Aetius en doa tost kement all: eiz ugent mil benag euz tud Attila a oue lazeta en devez-se. Ar roue gouez, boaz da lavaret: « Me a zo goa- » len Doue, morzol ar bed; an douar na c'hell mui glaz- » vezi el leac'h ma 'z oun tremenet, » a oue red d'ezan tec'het arak ar Romaned hag ar Gallaoued unanet. Epad ma tistroe varzu he vro, evit mont da glask soudardet nevez, ha gellout flastra ar gristenien da vad, e kavaz var he hent kear Kologn, mogerioù huel d'ezi, ha kalz tud enni.

Ar gear ne c'hellaz ket enebi pell oc'h **Goalen Doue**, he zoudardet digernez a zaillaz gant kounnar var ar gristenien a oa eno. N'o devoue truez ebet ouz den: ar zoudardet divadez a oa mall ganto laza, laerez ha devi.

Er penn arak euz ar re a oue merzeriet, e oa Ursula hag eun toullad merc'hed iaouank a heuille anezi: deut

e oant da Gologn euz a Vreiz a zo hanvet brema Bro-Zaoz.

Ursula, gwestlet ganti he guerc'hded da Zoue, a alie stard ar re all da viret ho c'horf hag ho ene pur ha disklabez; ar zoudardet kounnaret ho lazaz oll: lod anezo a doaliou bir, lod all a daouliou kleze.

Pa oue skuiz soudardet Attila o tistruja hag o tevi, o laza hag o laerez, ez ejont kuit, hag hiniennou euz ar re a oa tec'het var ar meaz, a c'hellaz distrei e kear, ha sebelia gant henor korfou ar verzerien. Divezatoc'h, e oue savet eur japel var al leac'h m'oa bet lakeat ar c'horfou-ze, henoret e oue ho relegou santel, ar japel a oue hanvet chapel ar Guerc'hez.

Hed an amzer ez euz bet eun devosion vraz evit Ursula hag he guerc'hez e Kologn: eno e veler hirio c'hoaz, toullou ar beziou m'eo bet sebeliet ar Merzerezed enno; gullet a reer eno pennou ar guerc'hez santel, gant merkou ar verzerenti o deuz gouzanvet.

Euz a Gologn, an devosion da zantez Ursula a zo bet anavezeta tro var dro: an Urz Leanezed savet gant santez Anjela Merisi, ha skignet brema dre ar bed, en deuz roet muioc'h a vrud c'hoaz da hano ar vere'hez kalounek Bez' ez euz bet, betek ar bloaveziou diveza-man, meur a gouent Ursulinezed en eskopti Kemper ha Leon. Bez' e oa anezo e Kemper, e Kemperle, e Montroulez, e Kastell-Paol hag e Keraez. Ne oufe den lavaret ar vad o deuz great en hor bro an oll gouentchou-ze, dre an deskadurez kaer ha kristen a roent d'ar vugale.

SONJOMP ERVAD :

Santez Ursula a aliaz stard ar merc'hed iaouank a oa en he c'hompagnunez da vervel kentoc'h eget koll ho furete. Na peger kaer kentel evidomp! ar burete a zo, gant ar feiz, hor c'haerra tenzor. « An eneou chast, eme ar Skritur Zan- » tel, na vezint morse ankounac'heat: ar zonzj anezo a zo » atao e spered Doue. » Rak-se, evel hon tud koz brudet dre ho furnez, leveromp hirio da Zoue: « Poitus mori quam » fœdari; o va Doue, kentoc'h mervel eget beza saotret gant » ar pec'hed a impurete. »

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Santez Hedvij, Intanvez (1174-1243)

Ar zantez-man, bet en he buez prinsez ar Pologn, a zo breman henoret evel patrounez ar rouantelez-se.

Hedvij a oa merc'h d'eur prins euz an Allemagn, ha moereb da zantez Elizabet, rouanez an Hongrii. Bez' e oue devot ha vertuzuz azalek he bugaleach, hag he c'herent he c'hasaz' abred d'ar gouent. Beva a reaz seder ha laouen, eur skouer evit an oll; karet e dije tremen eno he oll buez, met he zud a felle d'ezo he dimezi d'an duk Herri euz ar Pologn, hag ar zantez a roaz he asant evit senti outo.

Eur vech dimezet, Hedvij a boaniaz da anaout mad he fried: aketuz e veze bepred da ober kement tra a blij d'ezan.

O veza gounezet he galoun evelse, e troaz anezan varzu Doue : an duk Herri a deuz da veza unan euz ar zantela prinsed a oa neuze var an douar.

Doue a vennigaz an daou bried santel, o rei d'ezho c'houec'h krouadur: Hedvij ho zavaz e doujans Doue. Evit miret n'o dije bet goall genteliou, ar vam zantel ne zigemeraz en he zi nemet servicherien fur ha direbech; ne oa ket evit klevet ober eur goall hano euz a Zoue, na lavaret eur gomz guest da goll an eneo: furnez he zervicherien a zisklerie d'an oll santelez ar vestrez.

An duk Herri hag hi a oa iaouank c'hoaz pa rejont ho daou ar veu a chastete, da lavaret eo veu da veva divar neuze betek ho maro evel breur ha c'hoar. Neuze ar Zantez en em roaz muioc'h c'hoaz d'ober vad d'he nesa: lakât a reaz sevel eur gouent tost da gear Breslau evit ar merc'hed ezomek o dije c'hoant en em rei da Zoue. D'ar re anezo n'o doa ket a c'hoant mont da leazed, Hedvij a roe peadra da ober eur fortun deread.

Eun deiz e oue digaset d'ezi ar c'helou e oa bet paket he fried er brezel, met Hedvij a redaz da gaout ar prins en devoa he brizouniet, ha var he feden, an duk Herri a oue losket da zistrei ganti d'ar gear.

Pa zenaz he fried da vervel, an intanvez santel a ieaz er gouent e doa lakeat sevel. Eno, petra benag ne reaz ket ar veuiou a ra al leanezed, e touge ar memez sae ganto, hag ec'h heuille ho reolen penn da benn. Lakât a re a he oll aked d'en em izelât: joa e oa ganti servi-cha ar re all, hag ober al labourou distera; kemeret a re ar plas diveza er c'hoer hag ouz taol: « C'houi, » emezi, d'al leanezed all, a zo priejou Jesus-Christ, » ha me ne doue nemet unan euz he zervicherezed. »

Devot braz e oa d'Hor Zalver stag ouz ar groaz, hag evit he henori e re a piniennou kalet meurbet. Ne gemere morse tam kig ebet d'he fred, debri a re a eun tam-mik pesked d'ar zul, d'ar meurs ha d'ar iaou; tremen a re a gant griziou louzou d'al lun ha d'ar zadorn, ha iun a re a divar bara ha dour d'ar merc'her ha d'ar guener. Bez' ez oa d'an oll eur skouer a zantelez hag a vertu-ziou.

Hedvij a glaske dreist peb tra ober bolontez an Aotrou Doue. Pa deuz d'ezi ar c'helou euz a varo he mab hena, lazet er brezel gant ar Tartared, ar zantez e leac'h gouela hag hirvoudi, a rentaz bennoz da Zoue evit ar groaz-se, hag a lavaraz d'al leanezed glac'haret: « Bolon- » tez Doue eo, ha ni a dle kaout mad bepred kement a » blij gantan. »

Eur c'hlenved a reaz d'ezi peur gloza he c'hurunen er baradoz: goulenn a reaz he zakramanchou diveza daoust ne oa ket fall da velet, met hi, sklerijennet gant Doue, a gendalc'haz.

Tremen a reaz prest goude m'oa deut he Doue d'ezi, er bloaz 1243, hag ar pab Klemant IV hel lakeaz var an aoteriou, tri bloaz var 'n ugent divezatoc'h.

SONJOMP ERVAD :

Evel santez Hedvij, lakeomp hor fizians e Providans an Aotrou Doue, ha digemeromp a galoun vad kement a c'hoarvez dre he urz; kavomp mad kement tra a fell da Zoue,

hag e vezimp eüruz. Marteze, kristenien, e kavit avechou goall galet ho puez, met sonjit pegen talvouduz eo ar boan d'an ene, sonjit ive e vel Doue an amzer da zont, hag e oar guelloc'h dre be 'n hent hoc'h hench a strezek ar baradoz. C'hoantât a rit aliez meur a dra hag a vefe noazuz d'eoc'h, hogen daoust ha n'eo ket mad kuzat ouzoc'h ar c'hleze pe an ampezoun a c'helfe rei d'eoc'h ar maro? Eun deiz e trogarekaot Providans Doue da veza digaset d'eoc'h kroazioù ha ne blijent ket d'eoc'h. Doue a zo evidomp oll eun Tad karantezuz, ne glask nemet hor zilvidigez; mad e vefe eta e sentfe he vugale outan, hag e rafemp bepred he volonte. Eüruz ar galoun a laka he fizians en Aotrou Doue!

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Sant Severin, Eskop

Ganet en Akiteen, er c'hrezdeiz euz ar Frans, Severin a oue savet mad en he iaouankiz, rak he dud a oa pinvidik ha kristenien stard. Kaset e oue d'ar skol gant beleien zantel, hag o veza ne glev nemet kenteliou kaer, ne vele nemet skoueriou devot, e teuaz da veza gouizieg ha modest.

Eur vech deut da baotr iaouank, Severin a oue oll da Zoue: ober a rea fae var ar bed, karet a rea choum pell hag hir da bedi en ilizou, ha kastiza he gorf dre ar binijen. An den iaouank a c'helle lavaret gant an Abostol sant Paol: « Jesus-Christ a zo va buez. » Dioc'h ma lavar an historiou koz, sant Severin a oue hanvet da eskop e Kologn, met na lavaront ket penaoz ec'h en em gavaz tud ar gear-ze, diazezet var ribl ster braz ar Rhin, en Allemagn, da ober anaoudegez gant eun den a iliz euz an Akiteen, er Frans. Var dro ar bloaz 346 eo e oue hanvet da ren an eskopti braz-se, met sakret e oue eskop, en despet d'ezan, koulz lavaret.

Eur vech sakret, e plegaz da vad da volonte an Aotrou Doue, hag e poaniaz euz he oll nerz, da lakât an urz da ren etouez an dud a oa fiziet ennan.

Doue a zikoure hag a gennerze he zervicher. Eur zulvez ma oa en he iliz, e klevaz azioc'h he benn eur c'han dudiuz. Ar zant a zaoulinaz hag en em roaz da bedi a greiz kaloun; neuze e lavaraz d'ar beleg a oa da dosta d'ezan: « Martin, eskop santel Tours, a zo o paouez mer- » vel, hag an elez a zoug he ene d'ar baradoz en eur gana. » Lusifer hag he zrouk elez o deuz klasket kemeret an » ene, met n'o deuz ket kavet ennan an distera tra hag » a vije d'ezo. O va breur. eme Severin d'he veleg, m'o » deuz an drouk elez klasket laerez ene Martin, penaoz e » c'helfemp-ni diouall razo, ni pee'herien ma 'z oump. »

Kaset e oue eur c'hammad da gear Tours; e guirionez, d'an heur m'en doa lavaret Severin, an eskop santel Martin a oa maro.

D'ar mare-ze, e veve en Allemagn eun ermit santel braz. Savet e palez ar rouaned, galvet m'en defe bet c'hoant, da gaout an oll eürusdet a gav eun den en danvez hag e plijadureziou ar bed, an ermit-se a oa eat da veva en eul leac'h distro: euz he oll zanvez en doa kaset gantan eur skudel goat ha netra ken. He vuez a oa paour, he binjennou kalet. Eun devez e c'houlennaz digant Doue, dre he beden, henvel ouz piou e vije er baradoz. Ha Doue a respountaz d'ezan: « Ke- » ment a eürusdet hag a c'hloar o pezo hag eskop Ko- » logn. » Laouen braz, an ermit a zavaz hag a ieaz da velle an eskop: he gaout a reaz oc'h taol, azezet dirak boued mad, gant kalz a dud en dro d'ezan: Severin a roe eul lein vraz en devez-se.

An ermit a ieaz kuit euz ar palez, nec'het-maró : « Penaoz, emezan, penaoz e c'hellimp-ni beza henvel er » baradoz, eun den hag a vev mad epad ma tebran boued » ken dister? » Met an dud ma komzaz outo a lavaraz d'ezan: « Taol an Aotrou 'n Eskop a vez servichet mad, » abalamour d'ar re all, met Severin he-unan ne zebr » koulz lavaret netra. »

Eun devez an eskop santel a glevaz mouez Doue :

« Kit d'ho pro goz, ezom a zo ac'hanoc'h. » Senti a reaz, var a lavar an historiou koz, mont a reaz var dro ar bloaz 410 da Vourdel, eno eo e varvaz.

Goude he varo, ar burzudou a reaz a ziskonezaz en doa sonj atao euz tud Bourdel. Eur bloavez m'oa beuzet ar vro oll gant an dour, kement a c'hlaouer a ioa bet kouezet, an dud a bedaz ar zant, ha kerKent e teuz ar zee'hor.

SONJOMP ERVAD :

Petra zo kaoz ma 'z eo ken diez savetei an eost bloaveziou a zo? ma 'z eus kement a boan e kaout traou en douar? Doue ar mestr kenta a zo disprijet; he c'hourc'hemennou a vez torret heb ehan. Skei a ra an dud avechou, evit ma teufent da gaout sonj anezan, da bedi ar zent he vignouned da c'houlen m'en defe truez ouzomp, ma pardounfe d'eomp. Ar Verc'hez Vari a lavare d'an daou grouadur var menez ar Zalet: « Skuiz oun o tiarbenn breac'h va » Mab; ma kendalc'h an dud da bec'hi, e vezint kastizet. » An dud o deuz kendalc'het da bec'hi: kastizet int bet.

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Sant Raphael, Arc'heal

Seiz kant hag eur bloaz benag araok donedigez Hor Zalver, e veve e Niniv eun den a zoujans Doue hanvet Tobias, euz a bobl Israel; kaset e oa bet en harlu da Niniv. Tobias, daoust ma oa en eur vro estren, a vire atao lezen Doue penn da benn, renta a rea servich d'he vreudeur e peb doare, sebelia a rea ar re varo, savet en doa he vab, hanvet Tobias evel dan, e doujans an Aotrou Doue.

Eun devez, Tobias a iez dall, ha neuze e teuz da zonj d'ezan en doa prestet arc'hant da C'habelus, eun den hag

a oa o choum e kear Rajes. Setu ma lavaraz d'he vab: « Kea da glask eur rener hag a hencho ac'hanout betek Rajes. »

Pa oue eat Tobias er meaz euz an ti, evit senti ouz he dad, e kavas eur beachour iaouank prest da vont ganthan. An arc'heal Raphael eo e oa, dindan furn eun den e bar he iaouankiz. Lavaret a reaz da Dobias koz: « Ho mab a renin iac'h, hag a zigasin en dro, ker iac'h all. »

» It eta o taou en hent, eme Tobias koz. Beach vad » d'eoc'h! Plijet gant eal Doue ober hent ganeoc'h! » Mab Tobias, he gi gantan, a heuillaz ar beachour iaouank gant ar brasa fizianz.

Var-dro an noz, e oant en em gavet ho daou e kichen eur ster ledan. Tobias a c'hoanteaz goale'hi he dreid e dour ar ster, met eur pesk braz-divent a lamaz gantan. Tobias a oue spountet, met an Arc'heal a lavaraz d'ezan: « Krogit emman, ha chachit anezan ganeoc'h. »

Tobias a zentaz, ha p'en doa tennet ar pesk er meaz euz an dour, an arc'heal Raphael a lavaraz d'ezan : « Divouzellit ha skarzit anezan brema, ni hen drebo en » hent. Dale'hit avad ar galoun, ar vestl hag an avu, an » tri zra-ze a zo mad da ober louzou. »

Epad an hent, en eur vont hag en eur zont, an arc'heal a roe da Dobias eur maread kenteliou kaer; eiruz e ouent penn-da-benn oc'h ober ho zro ha Tobias iaouank a zimezaz, var ali an arc'heal, d'eur plac'h fur ha devot.

Ar vam, choumet er gear, a iea bemdez var an hent, en esper guelet he mab. Eun devez, erfin, e velaz anezan o tont, ha setu hi d'ar red d'an ti: « Hor mab a zo a vel! » Ker buan setu ar e'hi en doa kaset Tobias iaouank gantan, o tont en ti en eur ficha he lost, hag oc'h ober mil joa d'ar paourkeaz dall.

Eun nebeut goude an tad, ar vam hag ar mab a oa adarre asamblez, dindan ar memes toen.

Var lavar an arc'heal Raphael, Tobias iaouank a frot-taz doulagad he dad gant vestl ar pesk en doa miret, ha goude eur pennad amzer, an den santel a velaz sklear adarre. Neuze e kouezjont oll d'an douar evit meuli Doue, ha Tobias koz a lavaraz: « Mil bennoz d'eoc'h, o

» va Doue, da veza roet d'in ar pare evit ma c'hellin
» e'hoaz guelet va mab o peuz digaset d'in en dro! »

Evit diskouez ho anaoudegez vad d'an arc'heal Raphael hag a gemerent atao ho daou evit eur beachour, an daou Dobias en em glevaz etrezo, hag a ginnigaz d'ezan an hanter euz ho madou. Mes hen a respontaz : « Truga-
» rekait an Aotrou Doue hebken; rak mad eo bet en ho
» kenver. Ar beden, ar ium hag an aluzen a dal muioc'h
» d'an den eget oll denzoriou an douar. Selaouit, Tobiaz
» koz, pa bedac'h, ha pa 'z eac'h en noz da enterri ar re
» varo, me a zouge ho pedennou betek tron an Oll-C'hal-
» loudc'g. Met abalamour ma oac'h karet gant an Aotrou
» Doue, e oa red o pije eur boan benag da c'houzanv.
» Brema Doue en deuz va digaset evit ho parea: me eo
» Raphael, unan euz ar seiz eal a zo, en env, dirag tron
» an Aotrou Doue. »

An daou Dobias a jomaz spountet; met an arc'heal Raphael a lavaraz e'hoaz d'ezo: « N'o pezet aoun ebet,
» nemet trugarekait an Doue en deuz va digaset d'eoc'h,
» ha kanit he veuleidiou. »

Var gement-se an arc'heal Raphael a vijaz adarre d'an env, hag an daou Dobias n'her gueljont mui:

SONJOMP ERVAD :

Nag a zoursi a gemeraz, an arc'heal Raphael gant an den iaouank Tobias! Eun dudi eo lenn, er Skritur Zantel, histor he veach dindan renadurez an arc'heal, hag an oll vadou a deuz, dreizhan, d'an tad ha d'ar mab.

An histor-ze a ziskouez d'eomp, sklear, ar pez a ra bemdez, evit hon ene, an eal mad en deuz roet an Aotrou Doue da bep hini ac'hanomp. Hon difen a ra eneb an diaoul, lakât a ra, aliesoc'h eget bep heur, sonjezonou santel da ziouan en hor spered, kinnig a ra hor pedennou da Zoue evit m'hor bezo grasou nerzus. Hon eal mad a zo atao var evez e peb mare euz hor buez. An daou Dobias a drugarekeaz an arc'heal, a ziskouezaz anaoudegez vad d'ezhan. C'houi, hag ober a rit-hu gant evez ho peden d'hoc'h eal mad bemdez?

AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Sant Gouesnou, Eskop

Ar zant-man a oa ginidik a Vro-Zaoz, a dud a lignez huel met paour. Sevel a rejont ho bugel e doujans Doue, hag he c'has a rejont da ober he studi.

Pa varvaz he vam, Gouesnou, oajet a drivac'h vloaz, a dreuzaz ar mor braz gant he dad Tugdun, he vreur Majan hag e c'hoar Tugdona. Douara a rejont ho fevar e Breiz-Izel, el leac'h m'ema breman kear Vrest. Neuze ez ejont pep hini euz he du evit beva didrouz hag ober pinijen. Sant Majan a ieaz varzu Plouguin, santez Tugdona da Lokournan-Leon, Sant Tugdun euz kostez Guipavaz, ha sant Gouesnou en em dennaz en eur c'hoat braz, eul leo hanter en tu all da Vrest. Eno e tremenaz he oll amzer o pedi, oc'h ober pinijen, hag o sonjal e perfeksionou an Aotrou Doue.

Evel ma lavar an Aviel: eur c'houlouen ken luger-nuz ne c'helle ket choum pell kuzet ha dianavezet. Kount braz Leon, o veza deut da chasael er c'hoat-se, a erruaz dirak lochen Gouesnou, hag a c'houlennaz digant an ermit piou e oa, ha petra a rea eno. Ar zant a zisplegaz d'ezan he vuez: « Evit ober va zilvidigez, emezan, em euz » kuiteat ar bed. » Ar c'houmt a blijaz d'ezan kenan komzou ar zant, hag a lavaraz: « Rei a ran d'eoc'h an » douar a c'helfot da gloza en eun devez. » Gouesnou a reaz neuze eun dro vale epad eul leo hanter, ha dre ma 'z ea, eur c'hleuz a zave var he roudou da gloza an douar-ze.

Ar brud a gement all o veza eat dre ar vro, eur maread tud iaouank a ziredaz da c'houlouen beva e kichen eun den ker santel evit kemeret skouer diouz he vertuziou, ha kaout sklerijen digantan. Ar c'houmt a gasaz labourerien da zével evit an dud-se eur gouent gant eur japel.

Epad m'edot gant al labour-ze, sant Gouesnou o velet n'o doa ket ar vansounerien dour da derri ho zec'hed, a lakeaz eun eienen da zével evito.

Pa oue sant Houardon, eskop Leon, en he glenved diveza, e kasaz kelou da zant Gouesnou da zont betek ennan: ar zant a iez heb dale an distera, hag a roaz d'an eskop santel he zakramanchou diveza.

Sant Houardon a lavaraz, araok mervel, lakât sant Gouesnou da eskop en he blas, ha sentet e oue outan. An eskop nevez a boaniaz d'ober kristenien vad euz tud he eskopti, epad ar pevar bloaz var 'n ugent m'ho gouarnaz.

Sant Gouesnou a iez, eun deiz, da velet e Kemperle, he vignoun an Abad sant Korbaziuz, a greiz m'edot o sevel he abati. An eskop santel a gavaz abeg el labour: « Va breur Majan, emezan, a zo eur mestr dispar da » ren mansounerien, great en deuz sevel d'in, demdost » da Vrest, eur gouent kalz kaeroc'h eget an tam labour-man. »

Mestr-mansouner Kemperle, drouk ennan o klevet taoler disprijans var he labour, a reaz d'eur morzol pounner koueza var benn an eskop santel, ha Goueznou a oue goall-c'hlazet. Reseo a reaz he zakramanchou diveza, ha prest goude e tremenaz, d'ar 25 a viz here euz ar bloaz 675.

Enterret e oue e Kemperle, met he vreur sant Majan a deuz divezatoc'h da gere'hat he relegou evit ho rei: lod da iliz Veur Kastell-Paol, ha lod all d'he gouent, e Gouesnou.

An douar roet gant Koumt Leon d'ar zant-man a oue hanvet Lann Gouesnou, ha guechall goz e oa difennet ober drouk d'an dorfetourien zoken, pa c'hellent en em zavetei var an douar-ze. D'ar Iaou-Bask, deiz ar pardoun braz, e veze douget relegou ar zant e prosesion da ober tro al lann-ze: ar brosesion-ze a vez great hirio c'hoaz.

SONJOMP ERVAD :

Guechall, hon tud koz a iea gant devoision da bardouna d'al leac'hieu m'o doa bevet ar zent. Eun honor braz e oa

evito dougen relegou ar zent e prosesion; en eur ober kement-se e tiskouezent ho feiz: tenna a reant bennoz Doue varno dre zikour pedennoù he zent.

Guelet a reer c'hoaz hirio meur a barrez hag a zo joa enno, pa vez hanvet kristenien da zougen ar relegou santel, met bez' ez euz ive parreziou all e leac'h m'o deuz an dud mez o tiskouez int kristenien: choum a reont heb mont da zougen ar relegou. O pet sonj euz eun dra, kristenien: henori ar zent a zo, en eun doare benag, henori Doue he-unan.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Sant Evarist, Pab ha Merzer

Doue ra vezo meulet da viken o veza m'en deuz roet eur rummad pabed santel d'an Iliz! He renet o deuz gant furnez, he sklerijennet o deuz dre ho gouiziegez, he henoret o deuz dre ho merzerenti.

Sant Evarist, ginidik euz ar Gres, a zo bet ar pevare Pab goude sant Per. A veac'h beleget, e rene eur vuez ker vertuzuz ha ken devot, ma teue dre he skoueriou hag he gomzou da lakât an oll galounou da domma evel he hini gant tan karantez an Aotrou Doue. An dud he zouje hag a rea he veulendi, ha goude merzerenti sant Anaklet, e oue hanvet da Bab. Met hen a oa ken humbl ma lavaraz ne oa ket din euz eur garg ken huel, hag e tliet dibaba eun all en he blas: n'euz fors piou, var he veno, a vije bet guelloc'h egetan. Seul vui e klaske en em izelât, seulvui e roe da anaout he zantelez, hag an oll, an dud a Iliz hag ar bobl n'o devoe nemet eur vouez evit lavaret e ranket he zével var gador sant Per. En desped d'ezan, koulz lavaret, Evarist a blegaz da volonteaz an Aotrou Doue.

Ar zant, eur vech ma oue Pab, a lakeaz he oll aked da bourvei da ezomou an Iliz. Ar gristenien a oa neuze

guall-gaset e peb leac'h gant ar baianed hag an here-tiked: Evarist, pastor karantezuz, a zougaz lezennou fur evit mad ar gristenien.

Lakât a reaz beleien devot e penn ar chapelioù e kear Roum, en eur rei d'ezo ar garg da lavaret an oferen enno, da brezeg d'an dud, ha da rei d'ezho ar zakramanchou.

Ne jومة devez ebet, hep rei ar gelennadurez kristen d'an oll hag ober katekiz d'ar vugale: ioul en devoa da ober vad d'an eneoù, ha ne skuize ket o labourat evit ho zilvidigez. Bez' en devoue ar joa da velet ar feiz hag an devosion o startât er c'halonou; ober a rea d'an dud trugarekât Doue, goude m'o deveze tosteat ouz ar zakramanchou.

Eun nebeut a baianed aheurtet, o velet an niver braz a dud a deue da ober fae var an doueou evit adori an den-Doue maro var ar Groaz, en em zavaz enep Evarist. Ar Pab santel a oue eüruz da veza kavet din da c'houzanv poaniou abalamour d'Hor Zalver Jesus-Christ. Lakeat a oue d'ar maro var dro ar bloaz eiz ha kant (108) goude donedigez Hor Zalver.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Evarist a oue hanvet da Bab en despet d'ezan, rak kaout a rea ar garg-se re huel evitan. Bez' e oa ken humbl a galoun ma lavare n'en doa ket aoualc'h a c'haloud da ren ervad an Iliz santel var an douar.

Nag a dud a veler, leun a ioul d'en em zevel, hag a zonz d'ezo beza gwest da gemeret ar c'hargou huella a zo er bed-man. *Bezomp humbl.*

II. — Ar zant-man, koulz hag ar zent all e peb amzer, a rea d'an dud trugarekât Doue, goude m'o deze resevet ar zakramanchou. Kaer o deuz ar veleien pedi hag aspedi, eur c'halz a zo fall da zonzal e Doue goude ar gommunion: mont a reont da govez, ober a reont ar binijen en deuz gourc'hemennet ar beleg, hag a veac'h m'o deuz kommunitet, setu hi er meaz euz an iliz. Daoust hag ar gristenien-ze n'o deuz netra ebet da lavaret d'an Aotrou Doue? gras ebet da c'houlenn digantan? Ar zent a lavar: « Goude ar gommunion, hor pedennou a zo nerzusoc'h, abalamour Jesus a zo

» neuze o c'houlenn ganeomp, pa 'z eo guir emma ennomp. » Gras ar gommunion a zo ker kaer ma tlefe eur c'hristen chouni eur c'hart heur, da nebeuta, da drugarekât Doue da c'houde ha sant Philipp Neri a gasaz eun devez daou gurust (machikot) gant peb a c'houlenn var elum varlerc'h eur gristenez hag a oa en em laeret er meaz euz an iliz dioc'htu goude ar gommunion. Varlerc'h ped ha ped all e tlefet mont gant goulou e parrreziou a zo, goude ma vez bet roet ar gommunion?

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Sant Magloar, Eskop

Magloar, ganet e Bro-Zaoz, a oue skoliet mad var skianchou ar bed ha var ar skianchou sakr, gant sant Iltud, diskibl sant Jermen.

He dud o doa eur renk huel, met e leac'h choun er bed, Magloar a glaskaz ar peoc'h en eur gouent. Kemeret a reaz skouer var zant Samson, he genderv, a oa kosoc'h evitan. Goude ma oue bet great avieler gant he genderv, pa deuz Samson en hor bro, Magloar a heuil-laz anezan.

Samson, eur vech digouezet e Breiz-Izel, ne zaleaz ket da zevel eur gouent; ren a rea ar gouent-se evel abad, epad ma c'houarne, evel eskop, ar vro oll var dro Dol.

Pa zantaz ar maro o tostât, an eskop koz a c'houlennaz digant he venec'h lakât Magloar en he leac'h; da c'houde, e rentaz, gant fizians, he ene da Zoue.

Magloar, hanvet da eskop en despet d'he humilite, na baouezaz, epad tri bloaz, da vont evel sant Samson da brezeg ar binijen hag ar feiz e Jesus-Christ d'an dud a oa o choun demdost d'ar mor en he eskopti. Ar feiz a oa bian e kaloun meur a hini euz he dud. Badezet e oant

bet, guir eo, met na oant ket bet kenteliet da c'houde, ha dra-ze ho feiz a oa dister, abalamour ma rankent beva etouz eur maread tud ha n'oant ket bet badezet zoken. Ouspenn m'oa an dud dizesk var guirioneziou al lezen gristen, e oant ive douget d'ar gasoumi; pennou braz ar vro n'en em glevant ket etrezo.

Magloar, troet var ar peoc'h, a roaz eun devez an dilez euz he garg a abad hag a eskop etre douarn Budok, unan euz he vella menec'h, hag a iez da guzat, doun en eur c'hoat, en eun ermitach dister. Eno, e sonje d'ezan e c'helle beva sioul, he-unan gant Doue, met he zantelez hen diskuillaz d'an dud divar dro.

Mont a reaz unan benag d'en em erbedi outan, sikouret e oue; dont a reaz re all o doa ezom sklerijen, pe a c'houlenne rekour ar iec'hed; ar zant, leun a vadelez, a sklerijenne, a baree an oll. Skuiz o velet an dud o tont heb ehan d'he drugarekat euz ar miraklou a rea evito, ar zant a dec'haz eun eil guech, met e leac'h chom var an douar braz, ez eaz d'eun enezen vian hanvet Serk, e Kichen Guernezey.

Eno, Magloar a gendalc'haz d'ober parcansou burzuduz. Kenta hini a reaz a oue renta ar iec'hed da vestr an enezen, klanv gant al lorgnez abaoue seiz vloaz. Leun a anaoudegez vad, ar mestr a roaz an enezen a bez d'ar zant, setu e savaz eno eun iliz hag eur gouent evit tri-ugent manac'h. Goumit a reaz d'ar feiz ar baianed a oa en enezen, ha ren a reaz he gouent gant karantez ha farnes ar guella tad.

Muia ma oue troet Magloar, hed he vuez, a oue var ar binijen hag ar beden: kastiza a rea he gorf dalc'h-mad, ha lavaret a c'heller e veze atao o pedi; avechou zoken, e leac'h mont da c'hourvez var ar c'holo en he gampr evit an noz, ez ea var ribl ar mor da bedi Doue. Miret a reaz, gant ar brasa evez, lilien gaer ar burete.

Erfin, leun a veritou, ar zant a oue diskleriet d'ezan deiz he varo. Lavaret a reaz divar neuze heb ehan: « **Unam petii a Domino.** Eun dra am euz goulennet, » eun dra a glaskin: ma 'z in da jom e ti va Doue hed » va oll buez. » Mervel a reaz var dro ar bloaz 585.

SONJOMP ERVAD :

Magloar a zo unan euz ar zent-se o deuz lavaret kenavezo da Vro-Zaoz evit dont da sklerijenna hon tud koz. Bez' ez eo eta unan euz hor madoberourien, hag unan euz hon alvokadet dirak Doue. Karomp evel ar zant-braz-man, ar burete, ar binijen hag ar beden; pa 'z eo guir ne c'hel lomp ket mont pell dioc'h an dud da veva hon unan gant Doue, evel dan, deomp da viana eur vech en amzer d'ar 7 tred, evit sonjal a zevri en hon ene.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

Sant Simon ha Sant Jud, Ebestel



An Iliz a ra gouel an daou zant-man, da gerver ar memez devez, abalamour m'o deuz labouret asamblez evit goumit ar baianed da feiz Jesus-Christ.

Simon a ioa leshanvet Kananean, dre ma oa ganet e bourkik Kana er Galile. Deiz he eured eo, var ar lavar lod, e chenchaz Jesus an dour e guin, ha divar ar burburzud-se, Simon a zilezaz peb tra, hag a heullaz Hor Zalver.

Jud a oa dre he vam, Mari Kleophas, euz kerent Hor Zalver, bez' en doa evitan ar brasa karantez.

Evel ma lennomp en Aviel, Simon ha Jud a oa bet choazet gant Jesus evit beza he ebestel. Ho daou, epad tri bloaz hanter, o doa klevet he brezegennou, ha gullet he vurzudou. Epad an daou-ugent devez ma choumaz Jesus var an douar, goude he resurreksion, Simon ha Jud o devoue an heur vad, meur a vech, da reseo he genteliou. D'ar Iaou-Bask, pa bignaz Jesus en env, e oant asamblez gant an Ebestel all, var ar menez Olivet.

Varlere'h sul ar Pantekost, goude m'o doa resevet ar Spered-Santel, an ebestel a zispartiaz an eil diouz egile, evit mont da brezeg ar feiz, dre ar bed oll, lod anezo en tu-man, lod all en tu zont. Simon a ieaz da gas sklerijen an Aviel d'an Ejipt, e leac'h ma c'hounezaz eur maread eneo da Jesus-Christ. Dre nerz he gomzou, kalz euz tud ar vro-man a droaz kein d'ar bed, evit mont da veva e leac'hiou distro. Ar re-man a oue an ermited kenta.

Euz he du, sant Jud, hanvet ive Thadee, a ieaz, goude ar Pantekost, d'ar Mesopotami. Ouspenn ma prezegaz eno, sant Jud a skrivaz eul lizer da gristenien ar Zaoheol, evit miret outo da zelaou eun nebeut falz-doktorred a felle d'ezo freuza labour an ebestel.

A benn eur pennad mad a vloaveziou, an daou abostol, Simon ha Jud, a zigouezaz asamblez er Pers. Eno, an daou zant ne espernjont netra evit hada e spered hag e kaloun ar baianed kenteliou an Aviel. Digollet mad e ouent euz ho foan, rak e nebeut amzer, tri-ugent mil den euz ar Pers a resevaz gras ar vadiziant. Evit entent ouz ar gristenien nevez-se, Simon ha Jud a reaz eur maread beleien.

An diaoul a egare, o velet he dron diskaret er Pers. Ha setu hen ha c'houeza, e kaloun an nebeut paianed

a joume c'hoaz er vro, eur gasouni spountuz ouz sant Simon ha sant Jud. Eun devez eta, e oue kroget en daou abostol evit ho c'has da dempl an idolou. Lavaret e oue da Zimon adori idol an heol, ha da Jud adori idol al loar, met an daou zant a respountaz: « Hoc'h idolou, » na fell ket d'eomp ho adori: drouk-sperejou a zo » kuzet enno, ha kement-se a velot dioc'htu. » Ker buan, var eur gomz hebken euz an daou zant, idol an heol hag idol al loar a gouezaz e mil dam d'an douar, hag an drouk-sperejou a oa kuzet en ho c'hreiz a dee'haz kuit, dindan furm daou vorian.

Ar baianed, drouk enno, o velet ho idolou bruzunet, a zaillaz var an daou abostol evit ho merzeria. Var an imachou e tiskouezer sant Simon gant eun hesken, abalamour ma oue heskennet he gorf dre an hanter. Sant Jud a vez merket gantan guech eur groaz, guech eul lans, pe eur hallegard.

Sant Simon ha sant Jud a varvaz e tro ar bloaz 65.

Lod euz ho relegou a virer, e Roum, en Eliz kaer Sant-Per, ha lod all e Katedral Toulous.

SONJOMP ERVAD :

Goude m'o doa great kement a vad er Pers, sant Simon ha sant Jud, a oue lakeat d'ar maro gant an nebeut paianed a joume c'hoaz er vro; an diaoul eo ho dougaz da ober an torfed-se. Dioc'h an dra-ze, arabad eo d'eoc'h beza souezet, ma klevit hirio en deiz, tud o trouk-prezeg euz Hon Tad Santel ar Pab, euz an eskibien hag euz ar veleien: arabad beza souezet e ve great brezel d'ezo. Keit ha ma choumo an douar en he zav, an traou a vezo er giz-se: Jesus en deuz hen lavaret. An diaoul a gavo atao tud fall aoualc'h evit he zikour, da freuza labour ar Pab, an eskibien hag ar veleien. Evidomp-ni, dioualomp na drofemp gant enebourien ar feiz, bezomp atao a du gant ar re a zo karget gant Doue d'hon henchta varzu ar baradoz, rak hon Tad Santel ar Pab, an eskibien hag ar veleien ne glaskont nemet hor mad, er bed-man hag er bed all.

AN NAVED, DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ HERE

SANTEZ ERMELIND, GUERC'HEZ

Ermelind a oa ganet er Flandr. He zad hag he mam o doa eur renk huel en ho bro, met brudet e oant da gaout muioc'h e'hoaz a vertuziou eget a zanvez, hag e rojont d'ezi eur gelennadurez kristen.

Ermelind a oa eaz he c'hentelia, rak he spered a oa digor da draou ar bed all, hag he c'haloun a oa douget d'ar vertuz ha d'ar zantelez; n'e doa e'hoaz nemet e'houe'h pe zeiz vloaz, pa lakea he brasa plijadur o klevet komz euz a Zoue. Na velet ket anezi o klask mont d'ar e'hoariou gant ar vugale all; kaout a rea guelloc'h beza o pedi pe en ti pe en iliz. Ne zougaz bis-koaz dillad kaer, met dillad plean hebken; pa veze lavaret d'ezi ne oa ket guisket pinvidik aoualc'h evit he renk, e respounte atao: « Ar e'haera guiskamant » evit eur gristenez eo an dillad modest. »

D'an oad a zaouzek vloaz, e veve e ti he zad hag he mam, evel pa vije bet en eur gouent: aketuz e oa bepred da bellât diouz kompagnunez tud ar bed. O ehomm e veze en eur gampric e kichen kampr he mam: atao stag gant eul labour benag, heb koll, e mare ebet, ar zonz euz a Zoue.

Kaout a rea d'ezi beza e'hoaz re dost d'ar bed eno, hag evit pellât muioc'h e c'houennaz aotre digant he zad da vont d'eun ti bian e kichen an iliz. Var bouez goulen aliez e oue lezet da vont di. Eno e oa tostoc'h da Zoue, hag e tremene an deiz hag an noz o komz gantan, hag oc'h ober pinijen. Betek he maro e renaz eur vuez kalet meurbed. Ne doa evit oll vagadurez nemet griziuou louzou; dougen a rea dindan he dillad groz eur zae reun, kastiza a rea he c'horf pur oc'h ober d'ezan

gouzanv bep seurt poaniou kriz: burzuduz eo e defe gellet herzel, heb mervel, ouz he oll dourmanchou.

Doue a oa ganti evit he c'hennerza, evit lakât en he c'haloun eur peoc'h hag eun dousder dudiuz hag a oa treac'h d'he foaniou: eun dudi e oa eviti divoaska poan er guel a Zoue. Pedi a rea heb ehan: kommunia a rea aliez. Goude eur vuez ker kalet ha ker santel, e varvaz evel ma varv ar zent, var dro ar bloaz 595.

He c'horf a joumaz eiz vloaz ha daou-ugent heb beza henoret e nep doare: gant an amzer evelato, e plijaz gant Doue diskuill santelez he zervicherez humbl. Eun nozvez e oue guelet var he bez eur sklerijen gaer, an dud a ziredaz, hag a velaz e oa eno bez Ermelind, ar plac'h santel e doa renet en he amzer eur vuez ken devot.

Doue a reaz da c'houde kaiz miraklou all e kenver ar re en em erbede ouz ar zantez-man, setu e teuaz evelse ar gristenien vad d'he honori ha d'he fed.

SONJOMP ERVAD :

Ermelind, plac'h iaouank pinvidik, na felle ket d'ezi en em viska kaer hervez giz ar bed: « Rak, emezi, an dillad » modest eo kaera guiskamant eur gristenez. » E pe leac'h ema hirio ar merc'hed iaouank ha zoken ar gragez a c'hell lavaret evel di? Ar merc'hed a vremen a zonz d'ezo n'o de-vezo ket a istim etouez an dud ma ne vezont ket guisket kaer, ha goulskoude, daoust hag an dillad kaer a ro muioc'h a dalvoudegez d'an den, a ro d'ezan muioc'h a vertuz? Ar pennou skanva eo a vez dalc'hmad fichet ar c'haera.

Hiniennou a gavo kalet ar c'homzou-ze, met livirit ama d'in: Ped ha ped all o deuz keuz, pa vezont var ho zremen- van, keuz da veza klasket en em viska re vreo en ho iaouan- kiz! Ped ha ped all, oc'h en em ficha divodest, a zo tec'het a nebendou divar hent ar vertuz, divar hent ar burete!

Bezomp guisket evel an dud a skouer vad euz hon renk: netra dreist.



AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ HERE

Santez Pelaji, Skouer a Binijen

Pelaji, deut da veza eur zantez brudet goude beza bet eur bec'herez vras, a zo unan euz ar skoueriou kaer roet gant Doue d'he Iliz, evit diskleria he drugarez e kenver ar bec'herien.

Pelaji a oa ar genta komedianez euz kear Antioch. Brudet e oa dre he gened dispar, ha muioc'h e'hoaz dre he dizursiou. Ne doa ken sonj nemet klask plijout d'an dud; hag evit dont a benn d'ho gounit, ee'h en em viske kaer meurbed, hag en eun doare divodest.

Hogen, sant Nonnus, eskop Heliopolis, a zigouezaz eun devez e kear, ha patriarch Antioch her pedaz da ober eur brezegen d'he bobl da genver eun deiz gouel. An den santel a oa ker brudet, ma oue guelel pobl kear a bez, koulz lavaret, o tiredet d'an iliz, pa oue gouezet e tlie prezeg. Sant Nonnus a brezegaz gant kement a galoun enep an techou fall, displega a reaz ker sklear stad truezuz ene ar pec'her, diskouez a reaz ker brao a hent all, trugarez vraz an Aotrou Doue e kenver ar bec'herien, ma lakeaz an oll dud da lenva en iliz.

Ar plac'h fall Pelaji, daoust ne oa ket bet badezet, a ieaz d'an iliz en devez-se, dre eun taol euz a c'hras Doue.

Komzou ar zant a ieaz var eün en he c'haloun, oc'h ober d'ezi sonjal en he guall buez: mantri a reaz gant ar glac'har, hag an daelou a rede euz he daoulagad. Dioc'htu goude ar brezegen, ez eaz d'en em strinka da dreid an eskop santel, ha dirak kalz a dud e c'houlennaz ar pardoun euz he fec'hejou gant gras kaer ar vadiziant. Sant Nonnus a respountaz d'ezi e tifenne lezennou an Iliz badezi eur bec'herez ker brudet, eur plac'h

a skouer fall: red e oa d'ezi, da zonjal beza guale'het gant dour ar vadiziant, chench buez ha diskouez bolontez vad.

Pelaji choumet stouet eharz treid an eskop santel, a lavaraz neuze: « Va zad, guelel a rit va daelou, glac'har » a zo em c'haloun. » Glac'har ar vaouez keaz a oa re anat evit ma vije gellet kaout difizianz anezi. Sant Nonnus a reaz katekiz d'ezi hag he badezaz. Edoug an deiz-se, ar zant a oue sederoc'h eget biskoaz; eur mignoun o veza goulenet digantan petra a oa oc'h he laouennât, e respountaz d'ezan: « Va breur, an deiz- » man a zo unan euz ar re gaera, hag ar re eürusa euz » va buez. »

Pelaji a oue chenchet oll dre c'hras ar vadiziant: o veza distroet d'he zi, e rannaz d'ar beorien he oll vadou, heb miret netra eviti he-unan. An drouk-spered, kounnaret en he enep, a reaz d'ezi gouzanv bep seurt poaniou, o klask he lakât da zistrei adarre d'ar pec'hed, met ar zantez, gounezet oll da Zoue evit mad, a reaz d'an diaoul kemeret an teach dre zin ar groaz, gant hanoiou santel Jesus ha Mari. A benn eiz dez e kuiteaz kear Antioch e kuz, hag ez eaz da joum en eur c'harv euz a Venez Olived, tost da Jerusalem. Eno e renaz eur vuez kalet meurbed, oc'h ober pinijennou braz: na veve nemet divar louzou gouez ha divlaz a greske anezo ho-unan er menez-se; na gomze nemet gant Doue hag an elez, rak he spered a veze savet atao etrezek an env.

He buez santel a oa eur skouer evit tud ar vro: komz a reant anezi evel euz eur burzud a binijen. Abenn pemp bloaz e rentaz eno he ene eüruz da Zoue, var dro ar bloaz 457.

SONJOMP ERVAD :

I. — An diaoul, evit koll an eneou, a rea da Belaji en em viska divodest: merc'hed hon amzer o deuz c'hoant tec'het evel di divar hent ar vodesti kristen. Diouallit, merc'hed; eur guiskamant modest a ziouallo an nep hen dougo; eun den iaouank, ha pa ve brein he galoun gant an techou

fall, en dezo respet evit ar guerc'hezad hag ar gragez kristen a zo guisket evel m'eo dleet.

II. — Pelaji a gavaz pareans he ene en eur guir kontrision.

Petra zo kaoz ma teu ar govesion da zougen ken nebeut a frouez, evit tud a zo? Ne reont nemet eur briz kovez, heb nemeur a gontrision.

Da zonjal ober mad he govesion, eur c'hristen a dle guelelet ar gourc'hemennou hini hag hini, guelelet ha torret en deuz anezo evit gallout ho diskleria oll, ha disken e guelelet he goustians. Sonjal a dle, da c'houde, eo red d'ezan kaout guir geuz d'he bec'hejou, goulenn ar gontrision digant an Aotrou Doue, ha sonjal e grevusdet ar pec'hed, e madelez Doue, e Pasion Hor Zalver. Er gador-govez, e tleer goudeze diskleria stad ar goustians evel m'ema.

Grit kement-se, hag ho kovesionou a zougo frouez.

AN UNAN HA TREGONT A VIZ HERE

Sant Kintin, Eskop ha Merzer

En amzer an impalaer Dioklesian hag an impalaer Maximian, meur a zen a iliz iaouank euz Roum a deuz en hor bro Frans da brezeg an Aviel: unan euz an dud kalonek-se a oa Kintin, mab eur senatour. Sakret e oa bet eskop gant ar Pab Kaius, ha deut e oa da jom e kear Amiens. Eur maread paianed, pa veljont ar burzudou a rea ar zant, a droaz gant an, hag a resevaz ar vadiziant.

Riktiovar, ar paian a c'houarne hor bro en amzer-ze, a glevaz hano euz aked Kintin evit prezeg an Aviel, hag a reaz kas raktal ar zant d'ar prizoun.

Antronoz, Riktiovar her galvaz dirazan.

« Pe hano oc'h euz, a c'houlennaz ar gouarner. E » pleac'h oc'h-hu ganet ? »

« Kristen oum, a respountaz ar zant, setu va hano » kenta ha kaera. Brema m'eo peuz c'hoant gouzout » muioc'h, an dud a ra Kintin ac'hanoun; ganet oum » e Roum; va zad eo Zenon, ar senatour. »

« Petra ! eme ar gouarner, eun den a renk huel evel- » doc'h, mab eur senatour euz a Roum, oc'h heuil » superstisionou sot ar gristenien ! !... ma n'eo ket » eur vez ! !... »

Dispount kaer, Kintin a respountaz d'ar gouarner: » Fazia a rit; ar relijion gristen, n'euz superstision ebet » enni, ha brasa henor an den, var an douar, a zo beza » diskibl da Jesus-Christ. — Ma kendalc'hit, eme ar » gouarner, me ho parno d'ar maro. »

Heb aoun ebet, Kintin a respountaz adarre: « Va » c'horf, mar kirit, a c'helloc'h bourrevi; met va ene, » na c'helloc'h seurt ebet varnan. »

Ar c'homzou-ze a reaz d'ar gouarner mont e kounnar, ha setu hen ha goure'hemen d'ar vourrevien skourjeza Kintin, var ar plas, betek ar goad.

Epad m'edot ouz he skourjeza, ar zant, he zaoulagad savet varzu an env, a c'houlenne digant Doue nerz da c'houzanv he oll boaniou, heb fallgalouni. Kerkent e oue klevet eur vouez hag a lavare: « Kendalc'hit, Kintin, kendalc'hit, rag me a vezo en ho kichen. »

Ker buan ive e oue guelelet ar vourrevien o koueza d'an douar, a stok ho c'horf; choum a rejont er giz se, eur pennad mad heb gallout sevel en ho zav: devet ho diabarz gant eun tan iskiz.

Riktiovar, o sonjal ne oa kement-se nemet eun taol sorserez, aberz an eskop, a reaz teuler anezan en eur prizoun en koe'h ha tenalloc'h eget an hini kenta. Met, e kreiz an noz, eun eal a ziskennaz betek ar zant, ha goude beza torret he jadenno, a zigoraz dirazan dor ar prizoun, en eur lavaret: « It, Kintin, it eskop kalou- » nek, var blasen vraz kear Amiens da brezeg lezen » Doue.

O velet ar zant hag ouz he glevet, c'houec'h kant paian a c'houlennaz ar vadiziant. Ar zoudarded karget d'he ziouall er prizoun a c'houlennaz ive beza badezet,

rak gouzout a reant ervad ne oa deut ar zant er meaz ac'hano, nemet dre vuzud.

Ar gouarner a joumaz kaledet en he bec'hed, met gant aon na vije deut tud Amiens da zevel gant ho eskop, e reaz kas Kintin d'eur gear all. Eno, dre urz ar gouarner koumaret muioc'h mui, e oue treuzet, tu ha tu, korf ar zant, euz an diskoaz betek he vorzed, gant diou varren houarn; dindan he ivinou e oue sanket tachou lemm.

Erfin, goude beza great d'ar zant divoaska an oll dourmanchou, kouls lavaret, Riktiovar a c'houre'hemennaz d'ar vourrevien he zibenna, d'an 31 a viz here euz ar bloaz 287. Ar re a oa var al leac'h a velaz ene Kintin, an eskop santel, o nijal d'ar baradoz, dindan furn eur goulmik venn.

Al leac'h ma oue dibennet an eskop santel a zo deut da veza divezatoc'h kear Sant-Kintin.

SONJOMP ERVAD :

Jesus a lavar en Aviel: « N'o pezet ket aoun rak ar re » a lam buez ar c'horf hebken: o pezet aoun kentoc'h rag » an hini a c'hell o kas d'an ifern, korf hag ene. »

Ar c'homzou-ze a rea da zant Kintin respount da Riktiovar, ar gouarner difeiz ha didruez: « Va c'horf, mar kirit, » a c'helloc'h da vourrevi, va ene avad ne c'helloc'h seurt » ebet varnan. » Ar zant-man ne rea ket a forz hag e vije torret, bruzunet, draillet, dispennet pe zevet he gorf, gant ma 'z aje he ene d'ar baradoz. Peur o pezo c'hui ive muioc'h a aoun da goll buez hoc'h ene eget da goll buez ho korf?...



AR C'HENTA DEVEZ A VIZ DU

Gouel an Oll Zent

Paianed Roum, 26 vloaz araoz ginivelez Hor Zalver Jesus-Christ, o doa savet eun templ en honor d'an oll doueou faoz, da lavaret eo, en honor d'an oll dechou fall; an Iliz santel e deuz benniget ha konsakret an templ-se, hanvet Pantheon Roum, evit henori oll zent ar baradoz: savet e deuz eur gouel evito oll.

Eun honor eo evit ar gristenien henori an oll zent ha pedi anezo.

An oll zent !Pa leveromp ar ger-ze, e sonj d'comp guelet ar baradoz digor; hag er baradoz, tron an Drinded Sakr, Tad, Mab ha Spered-Santel; Jesus, an den-Doue, o ren var an elez hag an oll zent, ha da dosta d'ezan, ar Verchez Gloriuz Vari, he vam.

Eno ema an daouzek Abostol a zo bet kenteliet gant Jesus he-unan; ar Verzerien o deuz skuillet ho goad evit ar feiz; ar Guere'hezad a zo choumet glan e kreiz breinadurez ar bed, hag a gan kantik dudiuz ar burete gant Jesus, ho fried; eno ema an Doktored o deuz sklerijennet ar bed; ar re oll, pe hi a zo bet tud santel atao, pe hi a zo bet pec'herien da genta ha sent da c'houde, o deuz bet sked ar zantelez huella, o deuz great miraklou, hag a zo bet skrivet ho hano gant an Iliz var roll ar re a zo o ren gant Doue en eürusdet eternal.

Mar deuz er baradoz kalz sent anavezet dre ho hano, sent hag a vez great ho gouel eun devez benag euz ar bloaz, ez euz kalz muioc'h a dud eüruz ha n'o deuz gouel ebet d'ezo ho-unan. Renet o deuz eur vuez devot, met heb ober miraklou; great o deuz vad, met dizonjet int bet buan; eur c'halz anezo, kristenien en ho buez, o deuz servichet Doue hg a zo maro e stad a c'hras;

re all, ganet ha savet er broiou digristen, er broiou paian, n'o deuz klevet hano ebet, edoug ho buez, euz relijion Jesus-Christ, met senti o deuz great ouz mouez ho c'houstians a lavare d'ezo ober ar mad ha tec'het diouz an drouk, setu m'o deuz gounezet ho c'hurunen. Da zeiz braz ar varn ziveza e vezint meulet, hini hag hini, dirak an env hag an douar: da c'hortoz, ne vezo ket henoret ho hano, mignoured Doue int, met an dud n'her gouzont ket. Evit henori an oll zent-se, a zo millionou ha kant millionou anezo, kristenien ha paianed, e ra an Iliz ar gouel hirio.

N'eo ket auale'h d'eomp henori an oll zent, red eo d'eomp ho fedî.

Pedi a raimp da genta ar zent braz, ar re o deuz great traou kaer, a zo anavezet dre ho hano.

Pedi a raimp, d'an eil, ar re n'int ket skrivet gant an Iliz var roll ar zent, hag a zo goulskoude e gloar ar baradoz: eneo bugale nijet divar an douar-man dioc'htu goude ho badiziant, tud iaouank skoet e kreiz ho nerz, tud koz choumet pell da zastum meritou, nag a bed mil a zo anezo! heb niver int, eme an abostol sant Ian.

Nag a bed en ho zouez o deuz eur garantez dispar evit pep hini ac'hanomp-ni! Ped euz hon tud koz, euz hon lignez a zo er baradoz hep m'her goufemp? C'hoant o deuz hor guelet en eürusdet ganto, pa 'z eo guir oump euz ho goad. Ped ha ped all a zo eno euz hor c'herent, euz hon amezeien, eur hor mignoured, tud hag o deuz hor zikouret var an douar-man, o deuz labouret en hor c'hichen, o deuz debret euz hor bara, o deuz pedet ganeomp, o deuz kemeret perz en hon levenez, o deuz konsolet ac'hanomp en hor poaniou. Breman o deuz kalz muioc'h c'hoaz a garantez evidomp, c'hoant braz o deuz da skuill varnomp kaerra grasou Doue evit ar skouerioù mad, an aliou mad, ar zikour on deuz roet d'ezo er bed-man, pe pa oant e tan ar purkator. « Eüruz ho-unan, sur euz ho eürusdet, eme-zant Aogustin, o deuz evel nec'hamant ganeomp-ni, kement » a ioul o deuz d'hor guelet ganto e savete. » Penaoz e c'helfemp choum heb ho fedî hirio ?

SONJOMP ERVAD :

Pegen eüruz eo ar zent? Guelet a reont Doue evel m'ema, gant he oll madeleziou, heuzet int en eur mor a sklerijen hag a eürusdet, ha gouzout a reont e pado an eürusdet-se da viken. Sonjomp mad e kement-man: etouez ar zent ez euz kalz hag o deuz renet hor buez, a zo bet ar pez ma 'z oump; ni, mar karomp, a vezo ar pez ma 'z int, gant ma tis-pennimp ho roudou. Ententomp kement-se, hag evit kaout muioc'h a galoun, leveromp gant sant Aogustin, o komz euz ar baradoz: « O palez kaer a Zoue, e leac'h m'eo pep tra » dous ha n'euz netra c'houero, e leac'h m'ema ar roz heb » drein, ar peoc'h heb brezel, ar vuez heb fin! O Jerusalem » an env, e leac'h ma kanimp atao, heb an disterra skuis- » der, kantikou kaer Sion! Piou a zamanto d'he boan, pa » zonjo en hoc'h eürusdet; piou a vezo digaloun o stourm, » pa zonjo er gurunen a zo ouz he c'hortoz? »

AN EIL DEVEZ A VIZ DU

Gouel an Anaoun

Goude beza meulet Doue deac'h, gant an oll zent eüruz er baradoz, goude beza ho fedet d'hor zikour da vont di ganto, ar gristenien a bed hirio evit an eneoù keiz a zo er purkator.

Ar purkator! Nag a hirvoud a zav euz al leac'h-se a boaniou! Eno ema an oll eneoù a zo maro e gras Doue, met gant eur pik benag var ho c'houstians, gant eun dle benag da baea. An den paour a goez ken alies er pec'hed var an douar! Guir eo, koves a ra, hag an absolven a effas ar boan eternel dleet d'ar pec'hed, ober a ra da c'houde ar binijen merket d'ezan, met nemet braz-dreist e ve bet he gontrision, e choum gant ar pec'hed eur boan benag da c'houzanv er bed-man pe er purkator.

Ha m'on deuz dle da c'houde ar pec'hejou marvel koveseat, nag a zle a zastumomp dre hor pec'hejou veniel ? Koeza a reomp ken aliez er pec'hejou-ze ! Poaniou ar vuez, ar piniennou, ar pedennou a bae eul loden euz an dle, met peurliesha, pa deu eal ar maro da gere'hat eun den, en deuz eur boan benag da baea c'hoaz, hag eo red d'an ene tremen dre ar purkator.

Ha poan zo er purkator ? Sant Thomas a respount : Tan ar purkator a zo ar memez tan gant hini an ifern : eur c'hem hebken a zo etrezo, an hini kenta a vezo mouget deiz ar varn ziveza, an eil a bado da viken. An Iliz a lavar d'eomp ez euz eur purkator, diskleria a ra ouspenn e c'hellomp sikour an anaoun dre hor pedennou hag hor piniennou, met n'e deuz diskleriet netra, da veza kredet dindan boan a bec'hed, divar benn ar poaniou a zo eno.

Ar zent a lavar d'eomp gant sant Thomas eo spountuz tan a purkator, met lavaret a reont ive eo dishenvel braz nerz ar poaniou : lod a c'houzanv muioc'h, lod all nebeutoc'h.

Eur c'halz euz ar zent a gred e teu ar poaniou da zemplât, da vianât, dre ma tosta ar mare ma ni jo an ene d'ar baradoz, hiniennou a lavar zoken ez euz eneo ha ne ziouskont er purkator poan ebet henvel ouz poaniou tan ar bed-man.

Met doktored an Iliz a lavar : « N'euz fors peger braz » eo poan an tan var an douar, n'euz fors peger iud e » c'hell beza er purkator, dister eo e kichen ar boan a » c'houzanv eno an ene, o veza ma rank choum pell » diouz Doue. » Doue a zo ker mad ! An ene dichaden- net, distaget diouz ar c'horf, en deuz c'hoant nijal varzu Doue, varzu ar sklerijen, an eürused; met justis Doue a ra d'an ene mont d'ar purkator : « N'oc'h ket neat » aoualc'h, dizle aoualc'h. »

Pebez ram-galoum ! Eur martolod bet er broiou pell, ha staget en eul lestr a vel d'he gear, a verv gant an ioul da derri he jadennou, da vriata he dud ; he ioul a zo dister e skoaz ar vall en deuz an ene da vont gant Doue, da gaout he lod baradoz.

An ene paour a vezo red d'ezan paea he zle, he oll zle dre amzer, nemet eun den mad benag a baeve evitan, ha setu perak ar guir gristenien a bed evit an anaoun. Pedi a reer evit an eneo dilezet gant an oll, pedi a reer evit ar re dreist oll m'eo eun dever evidomp pedi evito. Nag a bed a zo er purkator abalamour d'eomp !

Hon tud o deuz hor c'haret re, hag abalamour da-ze int bet tec'het eun nebeut divar an hent eün ; n'o deuz ket gourdrouzet, kastizet ac'hanomp pa dlient hen ober, dilezet o deuz ho deveriou a gristen evit rei muioc'h a amzer d'al labour, ha lesker muioc'hik a arc'hant ganeomp. Da biou eo pedi evito, ma n'eo ket d'eomp-ni eo ?

Hor mignouned, hon amezien o deuz resevet diganeomp eun ali fall benag, eur skouer fall benag avechou, kaoz oump bet d'ezo da ofansi Doue, da biou eo pedi evito ?

Pere eo an oberou mad a zikour an anaoun ? Ar piniennou, ar yuniou a raimp, an aluzen a raimp d'ar paour, an ofisou pe zervichou a lakaimp evitho, a raio vad d'ezho. Lavaret a c'hellomp ive evitho ar chapeled, ober Hent ar Groaz, reseo ar gommunion zantel, lakât oferennou.

Sant Ian Joseph ar Groaz, a zo he c'houel d'ar 6 a viz meurs, a ginnige ar zakrifis santel evit he vam a oa o paoues tremen. Guelet a reas, var a leverer, ene he vam dirak he zaoulagad, hed oll amzer an oferen. An ene, tenval da genta, a laouennea a nebeudou, dreist oll goude gorreou Doue. Pa achuas ar zant he oferen, an ene a oa kaer ha skedus : « Bennoz Doue d'id, va mab, eme ar vam, mont a ran d'ar baradoz gant da zikour, eno e pedin evidot d'am zro. »

SONJOMP ERVAD :

Da bed den n'on deuz ket lavaret pa oant toc'hor : « Be- » zit dinec'h, ni a bedo evidoc'h, birviken ne viot dizounjet. » Eur bedennik benag a vez lakeat ha great dioc'htu goude ar maro, met araok ma vez diouanet ar ieoten genta var ar bez, an den, aliez a vech, a zo kasi ankounac'heat. Siouaz ! peger kriz oump e kenver hor guella mignouned !

Eur vaouez devot e doa *testamantet* oferennou ha pedennou, da lakât eviti goude he maro; he heritourien a lavaraz: « D'ober petra lakât pedennou, eat eo var eün d'ar » baradoz! » Ne oue lakeat peden ebet, met prenet e oue eur gurunen gaer, skrivet varni e lizerennou braz: « Keuz da virviken! » Ar gurunen a oue douget d'an enterramant, ha lakeat brao var ar bez, eno eo choumet. Pe seurt vad e deuz great d'an ene, mar deo eat d'ar purkator?

Ral eo guelelet tud ken digoustians hag an heritourien-ze, met daoust ha direbech aoualc'h oump oll evelato, e kenver an anaoun?

AN TREDE DEVEZ A VIZ DU

Sant Guinal, Abad

Ar zant-man a zo ganet en Erge-Vraz, e kichen Kemper, pe e Lanvenek, e parrez Lanrivoare; ne ouzer ket mad aoualc'h. He dad, ar c'hount Romelius, hag he vam, Levenez, a oa tud a lignez huel. Ar bugel a oue hanvet Guinal pe *guenn eal* da zeiz he vadiziant, hag he ene a joumaz guenn kann, azalek an deiz-se betek he varo.

Sant Guenole, abad Landevennec, deut da velet he vignoun sant Korantin, eskob Kemper, a ieaz dre ar vro da brezeg an Aviel; epad ma tremene abiou da gear Guinal, ec'h en em gavaz gant ar bugel. Hen-man, seiz vloaz neuze, a c'houlenmaz he vennoz digant an abad santel. Ker kaer ha ker seder e oa ma choumaz sant Guenole da zellet outan, komz a reaz da c'houde evelhen: « Va mab, ha dont a rafac'h ganen d'an abati? » Eno e veuloc'h Doue deiz ha noz. — Oh ia, va zad, » eme Guinal, nag eüruz e vefen da veza bepred e » servich Doue. Prest oun da vont ganeoc'h raktal, ha » da ober kement a c'houdehemmot d'in. » Hag ar

bugel a iea da heul ar zant: abenn eur pennad hent, sant Guenole a lavaraz d'ezan: « Va mab, distroit d'ar » gear, rak pell ema va abati ac'hale: re vian oc'h » c'hoaz evit ober an hent. — Va zad, an Aviel a lavar: » an den a grog en alar hag a zell var he lerc'h, n'eo » ket great evit ar baradoz: ma! great eo ganen va » zonz d'en em rei da Zoue en hoc'h abati, ne c'hellin » mui trei kein d'eoec'h. »

Sant Guenole gounezet gant ar c'homzou-ze, a deuz gantan da gaout he dad hag he vam; ar re-man a skuillaz daelou a levenez o klevet mennoz ho mab, hag a roaz anezan d'an den santel. E Landevennek, ar bugel a boaniaz kement da studia ha da bedi ma oue guisket d'ezan d'he zek vloaz ar zae a vanac'h.

Ar manac'h iaouank a heuillaz reolen a vuez ar gouent: iun a rea zoken aliesoc'h eget n'oa goude'hemmet, ha bemnoz, n'euz fors peger ien a veze an amzer, e tiskenne en dour betek he gazeliou, epad ma lavare ar seiz psalm a binijen.

Done o veza diskleriet da zant Guenole heur he varo, an abad santel a c'halvaz he oll venec'h: rei a reaz d'ezo he genteliou diveza hag e lavaraz henvel sant Guinal da dad abad en he blas; an oll a zentaz hag a roaz ho mouez d'ezan. An Tad nevez a gendalc'haz da ren he Vreudeur evel m'en doa great sant Guenole, met a-benn seiz vloaz, sant Guinal a roaz an dilez euz he garg, hag a 'z eaz gant unnek manac'h da Vreiz-Veur pe Vro-Zaoz ha d'an Irland. Eno e choumaz epad pevar bloaz ha tregont, o ren he venec'h var hent ar zantelez. Neuze eun eal a gemennaz d'ezan, a berz Doue, distrei da Vreiz-Izel; Guinal a zavaz raktal var eur vavig vian, hag a zouaraz e Kerne. Dindan nebeut a amzer e rankas sevel teir gouent, ha da c'houde e treizaz enezen Groaz.

Kerkent ha ma touaraz en enezen, ar c'hleier a zounaz anezo ho-unan, an oll dud a ziredaz da velet ar zant ha d'he henori; sant Guinal a joumaz eno eur pennad amzer evit prezeg komzou Doue, da c'houde e tistroaz da ober he ermitach en eul leac'h distro, e kichen an

Oriant (**Lorient**). Eno e renaz eur vuez kuzet, anavezet er penn kenta gant Doue hebken, ha gant loened gouez ar c'hoad.

He zantelez hag ar miraklou braz a rea a ziskuillaz ar zant, dont a reaz tud da c'houlenn beza renet gantan, ha sevel a reaz eur gouent evito. Eno, er gouent-se savet var ribl ar Blavet, eo e varvaz sant Guinal, er bloaz 590 pe var dro.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a c'houlennaz digant sant Guennole he hench varzu ar baradoz. « Va zad, emezan, prest oun da ober » a galoun vad kement a c'hour'hemennot d'in aberz » Doue. » C'houi ive, kristenien, goulennit sklerijen digant Doue ha dibabit mad ho tad kovesour, evel sant Guinal, evit gellout komz eveldan. Doue a ro d'ho tad kovesour ar garg d'ho ren varzu ar baradoz: d'ezan eo d'ho kentelia p'oc'h euz ezoum, d'ho konsoli en hoc'h enkreuz, d'ho kenerza er brezel a ra d'eoc'h enebourien an eneou.

Bez' ez euz tud, re laosk ho c'houstianz: an diaoul a glask ho lakât da gredi n'euz ket a bec'hed e leac'h ma 'z euz; tud all o deuz eur goustianz re striz, hag an diaoul a ra d'ezo sonjal ez euz pec'hed e leac'h n'euz ket.

An daou rummad tud-se o deuz ezoum da veza kelennet: arabad d'ezo ober dioc'h ho zonzj, met goulenn a dleont sklerijen digant ho zad kovesour.



AR PEVARE DEVEZ A VIZ DU

Sant Charles Borromeo, arc'heskop (1538-1584)

Charles Borromeo a oa ginidik euz an Itali; he dud, pinvidig braz ha tud a feiz, a boaniaz d'ober eur c'hristen mad anezan.

Kaset e oue d'ar skolach, met eno e rene kalz a zizursiou, hag ar skolaerien all, o velet e teue Charles, dre he zevosion, da goundaoni ho buez diroll, a reaz ho zonzj da goll ene an den iaouank. Charles a oue treac'h d'he vignoumed fall; rak er skolaeh koulz hag er gear e choumaz atao pur ha modest. Diou vech doktor edo, pa oue aehu he studi gantan.

Eun contr d'ezan o veza bet kurunet Pab prest goude, Charles a oue hanvet kardinal hag arc'heskop e Milan, en despet d'he iaouankiz, rak ne oa c'hoaz nemet daou vloaz var 'n ugent. Senti a reaz, ha reseo a reaz, hep dale, an oll Urziou sakr, an eil goude egile. Eskopti Milan a oa d'an ampoent en eur stad truezuz, hag ar gristenien, laosk kenan en ho feiz; met Charles ne gollaz ket kaloun.

D'ar mare-ze konsil Trant a embanne ar reolemmou nevez a dlie beza heuillet en Iliz. Charles na oue ket an diveza o tiskleria da dud he eskopti ar pez a rankent d'ober evit senti ouz ar Pab hag an eskibien bodet var he urz. Divar netze, e renkaz peñ fra en he di, guelloc'h c'hoaz eget araok, guerza a reaz he arrebeuri kaer, ha ne zalc'haz nemet ar pez a oa red; chench a reaz er memez amzer he zoare da veva o kas divar he dro eur c'halz euz he zervicherien, niveruz d'an ampoent. He di a oue henvel ouz eur c'hloerdi; bez' en devoa gantan tost da gant den a Iliz, ha pep hini anezo en doa he garg hag he labour.

Goude beza lakeat eun-urz ker braz da ren en he di, Charles a lakeaz ive urz etouez an dud a Iliz euz kear Milan, ha gueleit e oue en eun taol kount an ofisou o kaerât, hag an dud fidel o kemeret perz enno kalz muioc'h eget diagent. Sikour a reaz menec'h ha leanezed kear da veva santeloc'h e'hoaz eget a raok, o tougen evito lezennou leun a furnez. An dud fall, drouk enno o velet ar vad a rea, a baeaz eun den da laza an arc'heskop santel, met an tenn a oue laosket varnan, epad ma lavare ar pedennou dioc'h an noz gant oll dud he di, na reaz, dre e'hras Doue, drouk ebet d'ezan. Charles a bardounaz d'an hini en doa klasket he laza.

Goude beza nevezet ar giziou kristen e kear, ez eaz da velet oll parresiou an eskopti, hini hag hini, en eur derri ar giziou fall dre ma 'z ea, hag en eur gelen ar boblou. Diez eo rei da entent ar boan a rankaz kemeret o vont ar parrezioù gouesa, met ar vad a rea d'an oll a roe kaloun d'ezan.

Goude-ze, evit ma vije santeloc'h ha gouiziecoc'h ar veleien karget da ren ar bobl, e reaz sevel seminerion pe gloerdiou, hervez goulenn konsil braz Trant. Sevel a reaz ive skolachou nevez evit ma vije kelennet ar re binvidika hag ar re zesketa euz an dud iaouank, var ar zantelez koulz ha var ar vouiziegez; hag e c'halvaz menec'h euz ar re vella evit ren ar skolachou-ze.

Terri a reaz ar giziou fall a rene e kear Milan evit deizioù morlarjez pe an ened hag a roe tro da galz dizursiou; diskuillet e oue neuze d'ar Pab ha d'ar roue gant ar pennou braz euz ar vro, met ar roue a oue red d'ezan anzañ e oa renet mad eskopti Milan.

Buez ar zant a oa pinijennuz, rak he voued a oa dister, ha iun a rea aliez; guisket e veze paour evit ober brasoc'h aluzennou d'an dud ezomek. He garantez evit ar beorien a oue anavezet dreist oll pa deuaz ar vosen da rivina kear Milan er bloaz 1576, rak Charles a reaz guerza he oll arc'hanteri ha betek he vele, evit sikour anezo. Divar neuze, an arc'heskop a gouskaz var ar e'holo.

Mervel a reaz d'ar 4 a viz du euz ar bloaz 1584, ha lakeat e oue e renk ar zent er bloaz 1610.

SONJOMP ERVAD :

I. — Na kaer eo an urz a lakeaz ar zant braz-man en he di, en he gear, ha da c'houde, en he eskopti a bez! Mistri ha mestrezed, pe seurt urz a zalc'hit-hu en ho ti? Penaoz e c'houarnit-hu ho pugale, hag e tiouallit-hu ho servicherien?

II. — An arc'heskop santel-man, goude beza bet savet gant an oll eazamanchou o deuz an dud iaouank pinvidik, a zioueraz a nebeudou ar peb brasa euz an eazamanchou-ze evit mervel paour-Job. Ha c'houi, daoust ha ne glaskit-hu ket beva re eaz? Ha dioueret a rit-hu eun dra benag, eur vech en amzer, abalamour da Zoue?

AR PEMPED DEVEZ A VIZ DU

Ar Plac'h eüruz Franseza d'Amboaz

(1427-1485)

Merc'h da Louis d'Amboas ha da Vari de Rieux, Franseza a e'hanaz er bloaz 1427.

Kaset e oue d'he fevar bloaz, da balez duk Breiz, en Naonet; eno, koulz hag er gear, e devoue kalz skoueriou mad dirag he daoulagad. D'he femp bloaz, e oa dija ken troet var an devosion e kenver Jesus e Sakramant an Aoter, ma ne baoueze da lenva en devezioù ma veze bet oll dud al lez o reseo ar gommunion zantel. An dukez a e'houennaz diganti eun devez perak e lenne: « Ah! » emezi, re a leac'h am euz da skuill daelou; an oll, » nemedoun, a c'hell reseo hirio Jesus en ho e'haloun. » He e'hovesour o veza klevet hano euz a gement-se, a zellaz gant evez ouz Fransezaik, a velaz e doa skiant, deskadurez ha devosion en tu all d'ar re a oa kosoc'h eviti, hag a aotrez ar vere'h iaouank da gommunia d'he femp boaz: pebez levenez evit Franseza!

D'he femzek vloaz, ar brinsez iaouank a zimezaz da Ber, eil mab duk Breiz, hag a ieaz da joun gantan en he balez, e Guingamp. Eüruz e onent er bloaveziou kenta, rak Franseza a oa eur skouer a zevosion evit Doue, a respet evit he fried, a garantez evit he nesa: met da c'houde, kaloun Per a jenchaz var neat en he c'henver. Dont a reaz da veza eur goall zen evit ar brinsez, oc'h ober buez fall d'ezi heb ehan, hag atao var evez anezi; eun devez zoken, e skoaz ganti ken didruez, m'hel lezaz, beuzet en he goad, var leur ar gampr. E leac'h kounnari hag enebi, ar brinsez santel n'e doa lavaret d'ezan nemet ar c'homzou humbl-man: « Va mi- » gnoun, guell e ve ganen gouzanv ar maro kentoc'h eget » ofansi Doue, ha mont eneb ar ger am euz roet d'eoc'h; » dre va fec'hejou all em euz meritet beza kastizet, va » mignoun, plijet gant Doue ho pardouni. » Divar gement-se, ar zantez a gouezaz klanv, met parea a reaz.

Gant an amzer, an duk en devoue eur guir garantez evit Franseza: mes beva a rejont atao ho daou evel breur ha c'hoar.

Breur kosa Per, duk Breiz, o veza maro er bloaz 1450, Per ha Franseza a oue kurmet duk ha dukez Breiz; met seul huelloc'h e veze savet ar brinsez, seul humploc'h e choume. An duk, var aliou fall hiniennou euz he vignoned, o veza c'hoanteat kreski an taillou evit kaout muioc'h a arc'hant, ar zantez a viraz outan da da gas he ioul da benn: setu ma oue benniget gant ar bobl.

An duk Per a gouezaz klanv er bloaz 1457, hag ar vedisined ne gavent louzou mad ebet evitan, unan benag a lavaraz neuze mont da glask eur sorser brudet er vro. An duk, deut da veza santel e koumpagnunez Franseza, a respountaz kerkent: « Guell eo ganen mervel dre volon- » tez Doue, eget n'ez eo beva gant sikour an diaoul. » Tremen a reaz eun nebeut sizuniou divezatoc'h.

Franseza a oa neuze tregont vloaz hebken. Aliet e oue d'ober eun eil dimezi, mes respount a reaz nan krak ha berr.

Neuze e oue klasket he laerez evit he c'has da Baris,

met hi a ieaz d'an Naoned, hag eno ar bobl oll a zavaz evit he difen, kement e oa karet gant keariz, braz ha bian. Laosket e oue neuze da veva hervez he c'hoant, hag ez eaz er gouent leanezed euz Urz Karmez a oa bet savet ganti, en Naoned. Leanez e oue eur pennad, mes gant an amzer e oue hanvet da zupiorez. Bez' e oue atao an humpla, ar zentusa, ar baoura, an devota euz ar seurezed, hag eur zouez eo klevet hano euz ar pinijennou braz a rea. Boaz e oa da lavaret d'he C'hoarezed: « Grit dreist peb tra, ma vezo Doue ar muia karet. » Renta a reaz he ene kaer da Zoue, d'ar guener 4 a viz du 1485, da deir heur goude kresdeiz.

SONJOMP ERVAD :

Ar plac'h eüruz Franseza d'Amboaz a reaz he fask kenta d'he femp bloaz. Piou a lavaro betek pegeit en deuz great ar pask kenta-ze vad d'ezi? Saouret e deuz douzder Jesus er gommunion, araok m'e deuz tanvet falz plijadureziou ar bed; araok m'eo bet kaillaret, pilet gant an drouk-spered, Doue en deuz roet d'ezi purete, ha nerz; choumet eo pur hed he oll buez.

Petra eo da dud hon amzer beza kel lezirek da zigas ho bugale da gommunia? Senti a dleont ouz mouez Hon Tad Santel ar Pab Pi X, a c'houlenn ma teufe an tadou hag ar mammou, ar vistri hag ar vestrezed kristen da gelen ar c'hrouadur, da zeski d'ezan a vianik he Bater hag eun tamik katekiz, evit ma vezo resevet da dostât abred ouz an daol Fask. Pa vezo kennerzet ar c'hrouadur gant Jesus, e vezo easoc'h d'ezan choum pur ha disklabez.



AR CHOUEC'HVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Illud, Abad

Mil bennoz d'ar zant braz-man! N'eo deut da Vreiz-Izel nemet pa oa koz-koz, ha gouskoude hen eo en deuz sklerijennet ar c'horn douar m'emaoump o veva varnan, sklerijennet dre an diskibien en deuz keletnet: sant Paol a Leon, sant Samson, sant Jildas pe leltaz, ha kalz a re all.

Illud e oue den a lez ha den a vrezel er penn kenta euz he amzer, e Bro-Zaoz: offiser e oa gant roue Glamorgan. Eun devez m'oa eat he zoudardet da laerez e kouent Lannkarvan, hiniennou a oue skoet gant dourn Doue. Spoutet o velet kement-se an offiser a ieaz da c'houlenn pardoun digant an abad, sant Kadou; heman a lavaraz d'ezan: « It euz a douez an dud, Doue ho » koulenn d'he zervicha en eun ermitach. » Illud a zentaz dioc'htu.

Mont a reaz da veva he-unan gant Doue, evit ober pinijen. Deski a reaz neuze ar Skritur Zakr gant ar brasa aked, ha studia a reaz ive oll skianchou ar bed epad eun nebeut bloaveziou. Sevel a eaz eur gouent vras, ha pa deuz sant Jermen Aoxerr evit an eil gouent e Bro-Zaoz (447), e roaz an Urziou Sakr da Illud.

He gouent, Lan-Illud, savet e Bro-Zaoz, demdost d'al leac'h m'ema breman kear Cardiff, a oue brudet dizale dre ar vro oll, rak eno e keletnet var ar seiz skiant (grammer, philosophi, rhetorik, etc...) a rea deskadurez vraz an amzer-ze. Hiniennou euz he ziskibien a ouie ar gregach koulz hag ar brezounek.

Ouspenn studia ha pedi a reat er skol-ze; deski labourat an douar a reat ive, ha sant Illud a zo kenta hini a reaz eun alar evit sikour trei an douar e Bro-Zaoz. An

historiou koz a lavar d'eomp ar mirakl kaer a reaz eun devez, evit gellout labourat dizoursi.

Douarou an abati a oa tost d'ar mor, hag an douarou a veze avechou hanter veuzet, ken aliez guech ha ma veze reverdi braz. Kaer o doa skolaerien Lan-illud kaeat ouz ar mor, ho labour a veze freuzet hep miz. Ar baotred iaouank a c'houlennaz neuze sikour digant ho mestr, hag an abad santel a ieaz d'an aod pa oa izel-braz ar mor. Illud en doa nevez kenteliet anezo var ar c'homzou-man euz an Aviel: « Kement tra a c'houlenn » not digant Doue en ho pedennou a vezo roet d'eoc'h » hag a zankaz he vaz en treaz, demdost d'an dour-mor.

Neuze an abad hag he skolaerien a gouezaz d'an daoulin, hag a reaz ar beden-man da Zoue: « Salver » Jesus, c'houi a zo krouer an env hag an douar ha » mestr ar mor braz, c'houi a lavar d'eomp goulenn » diganeoc'h kemen on euz ezoum; difennit eta ouz ar » mor da veuzi douar an abati evit m'on dezo ama » peadra da veva: neuze e rentimp d'eoc'h muioc'h a » vennoz! »

Goude m'o devoue achuet ho fedenn, e tistrojont d'ar gear, ha pelloc'h ar mor ne zeuaz mui da c'holo douarou ar gouent.

Sant Illud, o veza deut koz, a lakeaz unan euz he ziskibien da ober skol en he blas, hag a dec'haz en eul leac'h distro evit santelât muioc'h he ene. Beva a reaz eno epad tri bloaz. Neuze e savaz c'hoant gantan da dreuzi ar mor braz, rak meur a hini euz he ziskibien, sant Paol, sant Jildas, sant Samson a oa deut da Vreiz-Izel. O veza douaret e kichen kear Sant-Malo, ez eaz da velet sant Samson a oa neuze eskop e Dol; chom a reaz eno da dremen he vloaveziou diveza. Prest goude, Illud, oajet braz ha karget a veritou, e varvaz evel ma varv ar zent: parrez Lanildud a zoug he hano.

SONJOMP ERVAD :

Ar bed a ginnige da zant Illud madou hag henoriou, met ober a reaz fae varno evit klask madou an env: ma 'z eo eun enor beza e servich rouaned an douar, kaeroc'h eo

kalz servicha an Aotrou Doue: rowe an envou ha mestr an oll rouanteleziou.

Pa deuz sant Hildut da veza guizieg, ec'h en em lakeaz da ober skol d'an dud iaouank: ouspenn ma teske d'ezo skianchou ar bed, e roe d'ezo kenteliou ar furnez hag ar zantelez; he vrasa joa a oa guelel ho c'halonou leun a c'hoant da veza sent.

Tadou ha mammou, mistri ha mestrezed, roit eur gelenadurez kristen d'ho pugale ha d'ho servicherien; ma savit anezo e doujans Doue, e tennoc'h varnoc'h he vennoz er bed-man, hag e tastumoc'h meritou evit ar baradoz.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Tremeur, Merzer

Desketa skrivanerien hon amzer var histor goz Breiz-Izel, o deuz diskleriet er giz-man buez ha maro sant Tremeur: Iona, kount an Domnonee, da lavaret eo, kount Leon ha Breiz-Huel, a oa bet lazec'h, dioc'h ma lavare an dud, gant Konomor, hag heman a rene ar vro en he leac'h. Evit kaout digarez da ren ive, divezatoc'h, var bro Vened, Konomor a c'houlennaz dourn Trifina, merc'h kount Guened. (Trifina a dlie beza mam sant Tremeur). Ar c'hount Guerok a respountaz nan: n'en doa tam c'hoant da rei he vere'h d'ar bleiz digaloum-ze.

Trifina, savet gant tud kristen ha kenteliet gant sant Jildas (6 c'houevrer) hanvet ive Ieltas, a oa koant ha devot-bras. Kount an Domnonee, e leac'h koll kaloun, a c'houlennaz a nevez Trifina; en dro-man, var ali sant Jildas, e oue roet d'ezan he c'houlouen. Toui en doa great var he le, dirak an abad santel, ne raje biken drouk ebet da Drifina, e vije eviti ar guella pried a c'helfet da gaout var an douar.

Sant Jildas a eureujas Konomor ha Trifina e Guened: an daou zen nevez a oue eüruz er penn kenta.

Guerok, goude beza roet he vere'h, ne rea hano ebet da rei he zilez: ren a rea bro Vened, ha pemp mab en doa ker goest hag he vab-kaer da ren ar vro var he lere'h. Konomor, mall gantan asten he c'halloud, a reaz sellou du ouz he bried Trifina.

Merc'h Guerok a zavaz aoun ganti; Doue en doa skuillet he vennoz varni, eun nebeut miziou goude m'oa dimezet, hag e doa c'hoant mont eun amzer e savete e ti he zad. Tec'het a reaz eta eun devez, mintin-mad, euz he c'hastell, redet a reaz varzu Guened. Ne dec'haz ket pell. Ar c'hount kounnaret en doa dispennet he roudou, hag a rede a benn herr, var he lere'h. Spountet-oll, Trifina a reaz lam en eur c'hoat, hag a glaskaz kuzat, met Konomor a gavaz anezi, hag a faoutaz he fenn gant eun taol kleze: en hanter 'n hent edo etre Rostrenen ha Corlay.

Great he daoll fall gantan, ar muntret a zistroaz d'ar gear. Servicherien ar brinsez a ziskleriaz an torfed da Verok ha da zant Jildas. Heman a zeuaz buan, hag a gavaz Trifina beuzet en he goad: dre nerz he bedemmou ha dre vertuz al louzou a roaz d'ezi, e reaz d'ar c'hreg iaouank rekour ar iec'hed: kas a reaz anezi da gastell Guened.

Sant Tremeur a zo ganet, prest goude, e maner he dad koz, e Guened: badezet e oue gant sant Jildas, ha diouallet mad diouz pep drouk. Bianik e oa c'hoaz, pa oue kaset da gouent sant Jildas e Rhuys; eno e kavaz eur maread paotred all, deut eveldan da studia skianchou ar bed koulz ha skianchou Doue. Etetant, Trifina a oa eat en eur gouent leanezed: eno e varvaz.

Ar paotrik a blije kalz d'ar vene'h dre he spered lemm hag he zentidigez, met eun devez m'oa eat da ober eur bale var ar meaz, e tigouezaz dirak he dad, hag heman, gant he goumar, a zibennaz anezan. Tremeur a oa iaouank-braz c'hoaz.

Konomor, exkummuget var dorgen Mene-Bre gant eskibien Breiz, dilezet gant eur c'halz euz an dijentiled

abalamour d'he dorfejou, a oue diskaret ha lazet prest goude, en emgann braz Plouneour-Menez.

Sant Tremeur a zo patrour Kerahes.

SONJOMP ERVAD :

E peb amzer ez euz bet tud kriz ha digaloun. Konomor a oa pinvidik ha gallouduz; bez' en doa eur pried euz ar re furra. Met allaz! ioul en doa da veza galloudusoc'h c'hoaz, hag an ioul-ze a reaz d'ezan beza muntret, ha diou vech muntret: muntret he bried, muntret he grouadur. Dioual-lomp rak an ourgouill!

Pegen eüruz eo sant Tremeur! Eur pennadik poan en deuz bet, ha setu hen breman o ren evit atao e gloar ar baradoz, gant diou gurunen gaer: hini ar verzerien hag hini ar guerc'hez. Ha ni, ha sonjal a reomp, en hor poaniou, on deuz eno eur plas, ni ive; on deuz eürusdet da gaout eno gant ar zent hag an elez, da viken: mar karomp.

AN EIZVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Ke pe Kenan, Eskop

Ganet e Bro-Zaoz var dro ar bloaz 400, dioc'h a lavar ar skridou great guehall, ar zant-man a oue savet ker mad gand he dud hag a oa ken devot, ma oue beleget. Eun nebeut bloaveziou goudeze e oue sakret eskop, rak an dud a oa leun a zoujans hag a garantez evitan.

Ke a oue skouer an eskibien dre he vertuziou, met burzudusa tra a velet emman, a oue he vadelez: n'en doa netra d'ezan he-unan. Guerza a reas kement vad en doa var he hano, evit ingala an arc'hant etre ar beorien, hag o veza m'o doa an dud vad truez outan, ha ma roent d'ezan heb ehan, hen a roe ive d'ar beorien, heb ehan, kement tra a reseve digant an dud.

Gant aoun na vije deut d'en em goll er bed, rak pounner e kave he garg a eskop, ar zant a dec'haz euz he eskopti, hag a ieaz da zével eun ermitach en eur c'horn all euz a Vro-Zaoz; eno he bedennou a reaz d'eur feunteun redet, tost d'al leac'h m'edo o choum.

Al leac'h-se a oa gouez, met ar zant a dorraz an douar, a zavaz eur japel ha lochennou, evitan hag evit an dud o doa c'hoant heuill eveldan aliou an Aviel; en em rei a reaz da Zoue a greiz kaloun. Eun devez m'edo kount ar vro o chaseal, eur c'haro a deuz d'en em zavetei e lochen ar zant hag ar c'houtm kounnaret a gomzaz d'an ermit: « E pe leac'h ema ar c'haro a zo » tec'het ama araok va chas? Roit-hen d'in dioc'htu, » pe me gaso ganen ho pioe'h hag hoc'h eujenned. »

Sant Ke, madelezuz, ne verzaz ket ar c'haro, met ar c'houtm a laeraz ar vioc'h hag ar seiz eujen a rea labour ar zant. Antronoz, eiz karo a zeuz abred kaer dirak an ermitach, staget e ouent oc'h an alar e leac'h an eujenned hag epad eur pennad, ar zant hag he venee'h a reaz ho oll labour gant kirvi e leac'h eujenned.

Ar c'houtm a oue skoet gant dourn Doue. Neuze e rentaz d'an ermit an eujenned en doa laeret, hag e roaz d'ezan, ouspenn, eun nebedik brao a zouar evit kreski he gouent.

Sant Ke a zavaz kerkent lochennou all, digemer a roaz da galz muioe'h a dud, met pa velaz e oa renket mad an traou, e rene ar feiz hag ar garantez etouez an dud a oa dindanan, e tec'haz da glask eur plas evit beva sioulloc'h gant eun nebeut euz he ziskibien.

Pignat a rejont en eur vag, douara a rejont el leac'h m'ema brema parrez Kleder. Eno ar zant hag he dud a reaz, evel atao, eur japel hag eun toulladik lochennou, hag a renaz eur vuez a binijen hag a zevosion. Ar c'harteriz a deuz a nebeudou d'en em voda en dro d'ar gouent, rak an abad santel a boanie kalz d'ho c'hellen ha da rei d'ezo ho zakramanchou, hag evelse eo e oue diazezet bourk Kleder.

Ar zant a dec'haz euz Breiz-Izel, en dro, evit mont da glask lakât ar peoc'h etre prinsed Bro-Zaoz, eve-

lato, na joumaz ket pell eno. Distrei a reaz buan, met d'ar mare-ze sant Kerrien, guella mignoun an abad, a oue galvet gant Doue d'he varadoz.

Ar zant, prest goude, a gouezaz klanv he-uman; mervel a reaz eun nebeut bloaveziou arak ar bloaz 500, hag enterret e oue e Kleder.

Sant Ke a zo patron Kleder ha diou barrez euz euz eskopti Sant-Brick a vez skrivet **Saint-Quay**. Kalz chapelioù a zo bet savet en he honor.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a zo bet atao mad da rei aluzen d'ar paour, ha seul-vui e roe, seulvui e kave da rei. Ha c'hoant oc'h euz e teufe ho madou da greski? Bezit truezuz ouz ar paour.

Mar deo mad dioueret eun dra benag gant an den ezomek, eo kerkoulz all rei eun ali mad d'eun den ankeniet ha trubuillet. Mareou zo an den a gav re gris he blaneden, en deuz c'hoant koll kaloun, en em rei d'an dizesper; eur ger a garantez, a gonsolasion lavaret d'ezan neuze, a roio nerz d'ezan da zougen he groaz adarre. Tud so hag o deuz danvez aoualc'h, hag o deuz goulskoude ezom aliez euz an aluzen-ze; euz komz vad eur mignoun, eun amezeg.

AN NAVED DEVEZ A VIZ DU

Dedi Iliz Hor Zalver e Roum

Ar gristenien a ra hirio, dre ar bed oll, eun offis kaer evit dere'hel sonj euz an devez ma oue konsakret an iliz genta en honor da Zoue, e kear Roum.

Er penn kenta euz an Iliz, pa oa heb ehan ar baianed o klask ar gristenien evit ho c'has d'ar barner ha d'ar maro, an ilizou a oa rouez ha dister. Ar gristenien en

em vode avechou e ti unan pe unan anezo, avechou all er mengleuziou douar a oa dindan kear Roum, hag eno e veze aliez great katekiz, lavaret an oferen, roet ar zakramanchou. An oferen a veze lavaret var eun aoter goat, abalamour ma veze easoc'h da ziblas, pa veze red. An ilizou a oa dister.

Pa oue Konstantin mestr ar bed oll, ar gristenien a zavaz ho fenn. Konstantin a roaz d'ar Pab sant Sylvestr unan euz he vanerioù braz e Roum, hanvet palez Latran, hag ar Pab a renkaz mad peb tra er palez-se, a lakeaz ennan eun aoter gaer ha taolennou presiuz, hag a gonzakraz anezan en doare ma konsakrer an ilizou hirio c'hoaz, d'an 9 a viz du euz ar bloaz 324.

An iliz-se, a zoug var he zal ar c'homzou kaer-man: « Iliz Sakr Latran, mam ha mestrez oll ilizou kear » Roum hag ilizou ar bed », a vel bep bloaz kalz tud o tiredet betek enni. E leac'h komz euz an iliz-se, e livirimp eur ger ama euz al lidou sakr a vez implijet, pa vez konsakret eun iliz nevez.

Re hir e vije merka hini hag hini an oll lidou-ze, setu hi ama e tri c'her: karza an iliz dionz an diaoul; rei an iliz da Zoue; rei difennourien d'an iliz.

Da genta: kas an diaoul kuit, terri he c'halloud el leac'h-se. Evit ma vezo kaeroc'h he ene, an Aotrou 'n Eskop a iun en dere'hent, stoui a ra d'an douar hed amzer litanioù braz ar zent evit anzañ n'oump nemet pec'herien dirak Doue. Bennigen a ra an hoalen hag an dour hag e kemer dour benniget he-uman da genta, evit beza neteat muioc'h; goude-ze e c'houlenn bennoz an Oll C'halloudeg var ar veleien a zo en dro d'ezan. Neuze e ra meur a vech tro an iliz, en dianveaz hag en diabarz, en eur daoler dour benniget heb ehan evit kas kuit an drouk-sperejou. Epad an amzer-ze, an iliz a joum goulo, ar gristenien ne c'hellint dont enni, nemet goude ma vezo bet kaset an diaoul kuit.

D'an eil: an iliz a vez roet da Zoue, a vez konsakret. An Aotrou 'n Eskop a ra var pave an iliz an oll lizerennou a zo e latin hag e gregach, evit diskleria e vezo prezeget lezen Doue e kement langach a zo, ha d'an

oll dud; goude beza taolet dour benniget var an aoter, ee'h ezans anezi, hag e ra varni aliez sin ar groaz gant an Oleo Sakr. Goude beza merket ar pave hag an aoter, en eur c'houlou ma teufe Doue da skuill he vennoz var ar re a zeui d'he bedi en he di, e ra sin ar groaz var ar mogerioù, evit lavaret sklear eo an iliz da Zoue, traon ha treac'h. Ar c'hroaziou-ze a zo daouzek anezo, evit merka eo iliz an douar merc'h iliz an env, diazezet var an daouzek abostol; ar c'hroaziou ruz a joumo da viken var ar vein, evit digas da zonzj d'an oll eo bet konsakret an iliz.

D'an trede: ar brosession a ia da glask relegou merzerien; siellet e vezont en aoter. Ar verzerien-ze a zo gant ar zant patroun hag arc'heal gardian an iliz, karget da veilla varni, da ziouall ar gristenien a zeu da bedi enni, ha da ginnig ho fedennou d'an Aotrou Doue. Er penn kenta euz an Iliz, e veze lakeat dindan an aoter oll relegou eur merzer; hirio ne c'heller lakât ha na vez lakeat, peurliesia, nemet eun nebeudik euz ar relegou.

SONJOMP ERVAD :

Lidou dedi eun iliz a zo henvel aoualc'h ouz lidou ar vadiziant: ar memes Oleo Sakr eo a vez implijet, kaset e vez kuit an diaoul dre bedennou ar beleg, sakret e vez izili ar c'hrouadur pe vein an iliz. Peger santel eo eta eun iliz dirak daoulagad Doue! Nag a nerz, nag a eazamant en deuz eur c'hristen hag a bed el leac'h-se!

Ha mad oc'h bet da vont d'an iliz da zul ha da c'houel, pa oa evidoc'h eun dever stris mont betek enni? Ha poania oc'h euz great da bedi gant devosion el leac'h-se, neteat ken aliez gant an dour benniget, santeleat ken aliez gant an Oleo Sakr?



AN DEKVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Andre Avellin

(1521-1608).

Ar zant-man, hanvet da genta Lanselot, a oa ganet e kichen Napl en Itali; diskouez a reaz a vianik, dre he zevosion, e oa galvet da veza eur zant.

Pa deuz en oad e oue kaset da ober he studi. Tud iaouank ar skolaou a gav eleiz a dentasionou var ho hent, ha dre ma oa Lanselot eun den kaer, e teuz, meur a vech, merc'hed divezet d'he denti; met an den iaouank en devoa bepred en he spered ar zonzj euz a Zoue hag euz ar Vere'hez Vari, ha dre sikour ar beden e viraz he ene neat a bep pec'hed.

Mont a reaz da skoliou braz Napl da beurachui he studi, ha dont a reaz da veza guizieg: neuze e oue beleget, hag e oue roet d'ezan ar garg a alvokad dirak lezvarn an aotrou 'n Eskop, e Napl. Hogen eun deiz, Lanselot, en eur zifen eur gaou, a lavaraz eur gaou dister; o veza deut d'he di, e kemeraz ar Skritur Zakr hag ee'h en em gavaz da lenn ar c'homzou-man: « Ar » ginou a lavar gevier a laz an ene ». Sevel a reaz kement a geuz gantan raktal d'ar gaou en devoa lavaret, ma reaz he zonzj da zilezel he garg, evit en em rei oll da zervich Doue.

Mont a reaz eta da gaout an aotrou 'n Eskop evit rei he zilez, hag hanvet e oue da zuperior var eur gouent leanezed e Napl. Ober a reaz deverioù he garg gant kement a aked ma tennaz varnan droulanz eur maread tud fall: ar re-man a oa ker braz ho c'hasouni ma rojont arc'hant d'eur muntre evit laza ar zant. Eun devez eta m'edo Lanselot o tont er meaz euz eun iliz, ar muntre a zaillaz varnan, hag a skoaz gantan tri daol kleze: eur burzud eo na oue ket lazet var an taol. Ar

zant en eur goueza d'an douar a bede Doue da bardouni d'e enebourien.

A veac'h edo pareet, ma fellaz d'ezan ren eur vuez santeloc'h, hag e teuaz da gouent an Theatined: eno e kemeraz an hano a Andre abalamour ma felle d'ezan karet ar groaz kement hag an Abostol sant Andre. Ober a reaz daou veu striz-braz: ar veu da vont bepred enep he volontez he-unan, hag ar veu da vont bemdez larkoc'h-larka var hent ar zantelez.

Hanvet e oue Superior hep dale: rei a rea he oll aked da zeveriou he garg, ha pa joume gantan eur penad amzer, ne ehane da bedi pe da labourat evit silvidigez an eneou.

Doue a roaz d'ezan an donezoun a viraklou. Eun nozvez e oa bet o koves eun den klanv var ar meaz; p'edo o tistrei d'ar gear e tirollaz eur barr amzer fall spountuz: ar glao a goueze, an evel a zute, ar gurun a strake mantruz. Goulou al letern a oue mouget gant an avel hag ar glao, met ar zant ne oue tam glebiet, ha dre ma 'z ea, an hent oll a veze sklerijennet en eun doare burzuduz.

Lakât a reaz he boan da asten he Urz, hag e savaz kouenchou nevez e Milan hag e Plaizans. Eskop Milan, sant Charles Borromee en devoa doujaz ha karantez evit ar zant, goulou a rea kuzul digantan aliez divar benn an traou brasa, hag he bedi a rea dale'h mad da brezeg ha da govez dre he eskopti.

Ar zent, koulz hag an dud all, a c'hell beza skoet gant eur maro trum, rak Doue a lavar d'an oll en Aviel: « Bezit var evez, ar maro a deuo evel eul laer. » Eun devez ma lavare oc'h traon an aoter komzou kenta an oferen: « Introibo ad altare Dei » Andre a oue skoet gant eun taol goad: lavaret a reaz ar c'homzou-ze teir guech, hag e kouezaz dilavar. Gellet e oue rei d'ezan an Aotrou Doue e viatik ha sakramant an Nouen araok ma tremenaz, er bloaz 1608 goude donedigez Hor Zalver.

SONJOMP ERVAD :

An dud a zo dinam ha c'haloun a blij da Zoue, hag a zo henvel ouz an elez; rakse an drouk-sperejou e deuz kasouni

outo, hag a laka ho oll galloud d'ho zouella, ha d'ho dougen d'ar pec'hed. An diaoul en deuz ioul da lakât an dud da goll ar vertuz a burete, met bezomp evel ar zant-man, bevomp bepred e doujaz Doue; neuze, heb mar ebet, e vezimp treac'h da finesaou ha tentasionou an diaoul.

Kasomp hor pedennoù da Zoue dre zaouarn ar Ver'hez Sakr: neuze e vezimp selaouet buanoc'h, hag hon dezo muioc'h a c'hrasou evit choum pur. Na kaer eo ar burete! kaer evel eul lilien skeduz: beillomp mad varni gant aoun na deufe da voenvi en hor c'halonou. Lagad an Aotrou Doue a zo laouen o para var ar c'halonou pur.

AN UNNEKVED DEVZ A VIZ DU

Sant Martin, eskop Tours

Martin, mab eun ofiser romen, a zo ganet en Aotrich-Hongrii, met mont a reaz abred da gear Pavi en Itali. Eno e teskaz ar relijion gristen, met he dud, paianed, a viraz na resefe ar vadiziant.

Galvet da vont he-unan d'an arme d'he bemzek vloaz, Martin a joumaz fur e mesk ar zoudardet: kaera vertuz en doa, a oa he garantez evit ar beorien. Eun devez, e kavaz e kichen dor Amiens eur paourkeaz hanter-noaz, e kreiz ar goanv: ar zoudard iaouank n'en doa netra gantan, met trouc'ha a reaz he vantel dre 'n hanter, evit rei lod da viska ar paour-ze. En noz var-lerc'h, e velaz, dre he gousk, Hor Zalver guisket gant an hanter-vantel; lavaret a reaz: « Martin, daoust n'eo » ket c'hoaz badezet, en deuz roet d'in ar guiskamant- » man. »

Martin, skoet gant ar c'homzou-ze, a resevaz buan ar vadiziant, servic'ha a reaz Doue guelloc'h c'hoaz, ha d'he zaou vloaz var 'n ugent e lavaraz kenavezo d'an arme, evit beza da Zoue hebken. Mont a reaz da gaout

sant Hiler, eskop Poitiers, met an Arianed a reaz kas Hiler er meaz euz ar vro, setu ma tistroaz Martin da Bavi, o sonjal sklerijenna he dad hag he vam var ar relijion.

Ar vam a zelaouaz an den iaouank, ha meur a hini euz he zud a reaz evel di, met an tad a jomaz paian aheurtet. Euz a Bavi, Martin a ieaz da brezeg an Aviel da Vilan, met a greiz ma laboure da c'hounit eneo da Zoue. Hiler a zistroaz da Boitiers, ha kerkent Martin a heuillaz anezan.

Gant aon d'en em goll er bed, ar zant a zavaz eur gouent e Liguje, demdost da Boitiers; eno e veve sioul ha didrouz gant enn nebeud diskibien, hag ac'hano e oa eaz d'ezan mont da zelaou an doktor braz sant Hiler.

Doue a reaz da Vartin ober burzudou kaer en he gouent: renta a reaz ar vuez da zaou zen maro, ha pa varvaz eskop Tours, ar zant a oue choazet evit ren an eskopti kaer-ze. Poan a gemere gant tud he eskopti, bez' e veze he ehan o velet an dud klanv, o sklerijenna ar baianed; ha kement a vurzudou a rea, ma tirede an dud euz a bell evit komz gantan, ha kaout ar pare.

He basianted a oa braz. Eun devez m'en doa gour-drouzet eur beleg ha ne oa ket direbech aoualc'h, heman a gomzaz direspert ouz an Aotrou 'n Eskop: « Guir eo, » eme Vartin, ne veritan ket beza eskop, met pedit » evidon ha me bedo ive evidoc'h. » Ar beleg a jenchaz o klevet ar c'homzou karantezuz-se, hag a deuaz da veza ken devot, ma oue eskop varlerc'h sant Martin.

Goude beza nevezet he eskopti a bez, ar zant braz-man a ieaz da brezeg an Aviel dre ar Frans oll, koulz lavaret, en eur ober miraklou dre ma 'z ea. Ne ouzer kount ebet d'an dud en deuz pareet dre vurzud.

Sant Martin en doa eur bloaz ha pevar ugent, pa gouezaz klanv en eur gear var ar meaz, neuze e c'houlennaz digant Doue dont d'he gere'hat divar an douar. He ziskibien glac'haret a lavaraz d'ezan: « Tad ka- » rantezuz, perak hon dilezel ? Pa ne viot mui, piou » hon diouallo? — Aotrou Doue, eme ar zant, mar deo

» red d'in choum c'hoas, e choumin laouen gant va » bugale. »

Met poan aoualc'h en doa kemeret, gounezet en doa he gurunen, na bareaz ket. Choum a rea gourvezet var he vele, he zaoulagad savet varzu an env, hag he ziskibien a lavare d'ezan: « Troit eun nebeudik, da ziskuiza. » — Va list, eme ar zant, da zellet ouz an hent a raio » bremaik va ene, evit nijal d'ar baradoz. »

Neuze e velaz an drouk-spered en he gichen: « Petra » rez aze, loan fall! eme Vartin, n'euz netra ennon hag » a vefe d'id. » Prestik goude e rentaz he ene da Zoue, er bloavez 400.

SONJOMP ERVAD :

I. — Mam sant Martin a resevaz ar vadiziant, met kaer en devoue ar zant pedi Doue, he dad a varvaz paian. N'eo ket aoualc'h d'eoc'h kaout tud santel en ho famill, red eo d'eoc'h, m'o peuz c'hoant beza saveteat, lakât hoc'h-unan ho polontez vad.

II. — Sant Martin a vije choumet c'hoaz var an douar evit plijout da Zoue; ne glaske nemet eun dra: ober bolontez hon tad euz an env. Greomp ar volontez-se, ni ive, ha neuze e vezimp var an hent a gas var eun d'ar baradoz.



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Martin, Pab ha Merzer



Ar zant-man a oa ginidik euz an Toskân en Itali; kaset e oue abred d'ar skol, ha deski mad a rea. Pa oue achu he studi gantan, e resevaz an Ursiou Sakr.

Pa deuaz ar Pab Theodor da vervel, sant Martin a oue hanvet en he blas. Ar Pab nevez a labouraz a zevri da startât feiz an dud fidel ha da asten an Iliz dre ar bed; na e'houlenne nemet ober vad d'an oll, sikour a rea ar beorien en ho dienez, mont a rea da gonsoli kement den en doa glae'har; rak-se e oue hanvet tad ar bobl.

Eur rum heretiked a zavaz en amzer-ze da lakât freuz en Iliz: lavaret a reant n'ez euz e Jesus-Christ nemet eur volontez hebken. An impalaer Konstant hag an eskibien euz ar Zao-Heol a oa goall droet gant an heresize, setu perak ar Pab a skrivaz d'ezo evit ho difazia ha diskleria d'ezo ar virionez.

An impalaer aheurtet a daolaz dismegans var ar e'hannadet kaset d'ezan gant ar Pab, hag a glaskaz ober

da Vartin trei gantan. Met an Tad Santel a respountaz: « Guell eo ganen koll ar vuez eget nac'h ar guir feiz! »

O veza bodet e Roum pemp eskop ha kant e konsil, e tiskleriaz ez euz e Jesus-Christ guir Doue ha guir den, diou volontez: bolontez an Doue ha bolontez an den; hag e taolaz an eskumunugen var an oll heretiked, ha var an impalaer memez.

Konstant, kounnaret, a roaz urz da rei ar maro d'ar Pab kalounek, met an ofiser a ieaz gant gouarner Roum, Olympius, da glask sant Martin, a gouezaz dall-put en eum taol: Olympius a e'houlennaz kerkent pardoun digant ar Pab, hag a dec'haz euz a Roum.

Pa glevaz ar e'helou-ze, an impalaer Konstant, e leac'h kaout keuz evel ar gouarner, a gounnaraz muioc'h eget araok, hag a gasaz daou euz he vignouned, da gregi er Pab santel evit he brizoumia. An daou Judas-man a bakaz ar Pab dre laer, hag a daolaz anezan dre guz en eur vag: neuze ez ajont gantan da redet mor ha bro epad tri miz; daoust ma oa klanv ar zant, e oue red mad d'ezan bale.

A benn tri miz e oue taolet en enezen Naxos, eno e vevaz er brasa dienez epad bloaz. Da e'houde, e oue kaset d'ar prizoun e Constantinopl, tamallet e oue eno ha barnet evel muntrer.

Kaset e oue var ar blasen, lammet e oue digantan he zillad a bab, ha neuze, liamet he zaouarn, hag eur chaden houarn en dro d'he e'houzoug, ar merzer a oue stlejet da ober tro kear etre daou archer hag eur vanden zoudardet. Dre ma 'z ea, an dud fall a e'hoarze, met ar re vad a goueze d'an daoulin, o e'houlen truez.

Taolet a oue er prizoun a nevez: na e'helle komz ouz den, ha daoust m'edot e kreiz ar goanv, e oue lezet en dienez a bep tra. Abenn tri miz, an impalaer o velet ne e'helle ket dre he oll grisder lakât sant Martin da nac'h ar guir feiz, a roaz urz d'he gas d'an harlu er O'hersones. Ar Pab santel, dianavezet gant an dud, goall gaset evel an diveza euz an dorfetourien, a beurglozaz eno he gurunen.

Pa velaz, a benn pevar miz, e oa dinerzet oll, e

skrivaz eul lizer a gimiad da Iliz Roum, evit lavaret d'an oll gristenien beza stard en ho feiz: « O va Zalver » Jesus, eme an Tad santel, guelec'ho euz va foaniou, » guelec'ho a rit ho karan dreist peb tra: mall am euz da » vont davedoc'ho, da veuli ho madelez epad an eternite. » O va Aotrou, skuillit ho krasou var hor Mam zantel » an Iliz, kennerzit an oll gristenien evit ma c'hellint » beza salvet! » Mervel a reaz er bloaz 655, goude beza gouarnet an Iliz epad c'houec'ho vloaz ha daou viz.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, ker mad evit an oll, ha dreist oll evit ar beorien hag an dud glac'haret, a oue kaset d'an harlu, hag eno n'en devoa den ebet da gaout truez outan. Greomp vad evel dan, hed hor buez, met labouromp evit Doue, n'eo ket evit an dud eo. Doue hon digollo er baradoz. Ar bed-man a zo eul leac'h a harlu, eun draonien a boan, a labour, a zaelou; met diskuiz ha levenez hon dezo gant an Aotrou Doue, epad an eternite.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Stanislas Kostka

(1550-1568)

Stanislas a oa mab eun dijentil braz euz ar Pologn: savet mad e oue gant he dud, ha ker pur, ker modest e oa a vianik, ma koueze semplet d'an douar pa gleve lavaret eur gomz mezuz benag.

D'he bevarzek vloaz e oue kaset gant he vreur kosa, Paol, da Vienn, da achui he studi e skolach an Tadou Jesuisted. Eno Stanislas a oue skouer an oll skolaerien, met abarz nemeur, siouaz! ar skolach-man a oue serret, a berz ar gouarnamant, hag ar skolaerien a rankas

neuze kemeret ho lojeiz e kear: Paol a iez gant he vreur da breja ha da loja da di eur protestant. Paol a oa goall droet gant ar bed, ne oa ket evit guelec'ho heb egari devosion Stanislaz. Epad daou vloaz e veze bepred var buez he vreur, oc'ho ober goap anezan, hag oc'ho alia anezan da ren eur vuez direol evel dan, met an den iaouank a respouante: « Ebatou ar bed a dremen buan, » me a zo galvet da vont d'ar baradoz a bado da viken. »

Karet a reas mam Doue evel ma kar eur bugel he van; ma felle d'he vignoned ober plijadur d'ezan, e tleent en em lakât da gomz euz ar Vere'hez.

Kommunia a reas bep sul, ha ne 'z ea devez ebet d'ar skol heb beza bet en iliz oc'ho adori ar Zakramant meulet ra vezo. Seulvui ma klaske he vreur Paol he zougen d'ar bed, seulvui Stanislas en em erbede ouz Doue hag ar Vere'hez, seulvui e laka evez da bellât diouz ar bed. Ober a reas pinijen: iun a reas bemdez, en em skourjeza a reas didruez. He gorf ne c'hellaz ket hervel ouz eur vuez ker poaniuz, hag an den iaouank a gouezaz klanv braz. Epad he glenved, an diaoul a gemeraz teir guech furn eur c'hi spountuz evit sailla varnan: met gant sin ar groaz, ar zant a reaz d'ezan kemeret an tec'ho.

O sonjal er maro, e c'houlennaz digant he hostiz ober digas d'ezan he zakramanchou, met kaer en devoa pedi, ar protestant fallakr ne reas van. Stanislas en em erbedaz neuze ouz santez Barba gant kement a zevosion ma oue selaouet he beden, hag ar zantez a deuaz gant daou eal da zigas d'ezan he Zoue. En deiz-se ive, ar Vere'hez Vari a deuaz d'he gaout: lakât a reaz ar Mabik Jesus etre he zivreaec'ho, hag e lavaraz d'ezan: « N'eo ket deut » c'hoaz heur ho maro: para a reot hag e c'helloc'ho » mont, evel m'her goulenmit, en Urz ar Jesuisted. » Kerkent Stanislas a gavaz ar pare.

Mont a reaz da c'houlenn digant an Tadou Jesuist euz Vienn he zigemeret, goulenmet e oue ive konje digant he dud, met ar re-man a zifennaz he reseo. Neuze e tec'haz eun nozvez kuit, var droad, evit mont da Roum; he vreur Paol o veza guelec'ho e oa tec'het, a redaz var varc'ho var he lere'ho, met a benn eur pennad, al loan a

joumaz a zav heb gellout kerzet. Stanislas a gendalc'haz da vale, guisket paour, hag o c'houlén an aluzen dre ma 'z ea; eun eal a gemmerzaz anezan dre ar gommunion zantel, epad ma rea hent.

Goude bez baleet epad tri c'hant leo, ar zant a zigouezaz e Roum. Dont a reaz da gaout superior an Tadou Jesuisted, sant Franses Borjia, ha digemeret e oue raktal evel *novis*. E ti santel an Tadou, Stanislas a grede beza er baradoz, ken eüruz e oa.

Goulennat en devoa digant he vam euz an env ar c'hras da vervel evit gouel hanter-east, rak c'hoant en doa da gana ar gouel er baradoz; d'ar 14 e lavaraz d'he vignouned e oa bet selaouet he beden. Hag, e guirionez, dioc'h an abardaez e krenaz an darsien: eur c'houezen ien a zavaz varnan, ha koll a reaz he oll nerz; an tad superior a deuz davitan: Stanislas a c'houlennaz beza lakeat var an douar da vervel, abalamour ma oa eur pec'her braz, emezan.

O veza bet koveseat, e oue digaset d'ezan ar gommunion dirak he Genvreudeur glac'haret oll. Ar re-man a velaz eur sklerijen gaer en dro d'he benn kerkent ha ma teuaz ar zakramant meulet ra vezo er gampr. Nouet e oue da c'houde; ar zant a zalc'he he chapeled en he zorn, petra benag ne c'helle ket he lavaret; met fellout a rea d'ezan her c'haout bepred gantan evit kaout sonj euz he vam vad.

Mervel a reaz prestik goude hanter-noz, ar aok sklerijen an deiz euz gouel Maria hanter-east, evel m'en doa goulennet. Ne oa ket c'hoaz trivac'h vloaz achu (1568).

SONJOMP ERVAD :

Sant Stanislas, den iaouank fur, a zo choumet pur evel eun eal, e kreiz ar bed, en despet d'he vreur a glaske he zougén d'ar pec'hed. Evit miret ar vertuz a burete e pellea diouz an dud iaouank direol, e tostea aliez ouz ar zakramanchou, hag ec'h en em erbede bepred ouz ar Verc'hez gloriuz Vari: evelse en deveze digant Doue grasou da zantelât he ene. Tud iaouank, kemerit skouer varnan: poaniit evel dan da ziuall diouz ar pec'hed.

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Josaphat, Eskop ha Merzer (1584-1623)

Ar zant-man a oa ginidik euz ar Pologn. He dud a oa tud a renk huel ha guir gristenien; sevel a rejont ho mab e karantez Doue: ne oa ket troet var ar c'hoariou, evel ar vugale all.

Pa oue achu he studi gantan, Josaphat a oue lakeat e ti eun contr d'ezhan, met e leac'h choum gant an eontrze e kreiz an danvez, an den iaouank a lavaraz kenavo d'ar bed, hag a 'z eaz da viska sae Urz sant Basil e kouent Vilna.

Hogen, bez' ez oa eul lochennik etre ar gouent hag an iliz, ha Josaphat a c'houlennaz mont di da joum: eno e renaz epad pell eur vuez kalet meurbet. Bale a rea atao diarc'hen, e kaloun ar goanv zoken, hag ar goanv a zo iud goulskoude er vro-ze; na zebre morse a gig ha na eve a vin nemet pa veze kemennet d'ezan. Dougen a reaz betek he varo eur zae reun, hag eur gouriz houarn, gant broudou emman. Great en devoa ar vœu a chastete, ha gant skoazel ar Verc'hez Vari e viraz na zeufe an distera tra zivalo da zaotri he ene.

Reseo a reaz an Ursiou sakr, ha goude ma oue beleget, ez eaz da brezeg an Aviel. Hogen, bez' e oa neuze, er Pologn, schismatiked ha ne felle ket d'ezo digemeret kemennadurez an Tad Santel ar Pab. Ar zant a iezaz da brezeg en ilizou, var ar plasemou, d'ar pardoumiou ha d'ar foariou; komz a rea a Zoue gant kement a sklerijen hag a garantez, ma c'hounezaz eleiz a dud d'ar guir feiz. Ar schismatiked a lezhanyaz anezan « laer an » eneo, « Oh, eme Josaphat, laerez an eneo digant » an diaoul a zo renta da Zoue an eneo en deuz krouet » evit ar baradoz ! »

Iaouank e oa c'hoaz pa oue hanvet da zuperior e kouent Bytenii, ha prest goude da abad e kouent Vilna. Arc'heskop Polosk o veza deut da vervel, an dud a Iliz a c'houlennaz oll ma vije lakeat Josaphat en he blas; ar zant a c'hoanteaz lavaret nan, met red e oue d'ezan plega.

Eur vech eskop, Josaphat ne jenchaz ket he zoare a vuez: ober a reaz ar memez piniennou rust a rea diagent, ha kendele'her a reaz da c'hounit eneo da Zoue. Diez e vefe niveri ar schismatiked a zo bet distroet d'ar guir feiz gant ar zant-man, met he vrasa ioul a oa lakât an oll da anzañ galloud an Tad Santel ar Pab.

Difen a reaz ive ouz an dud a renk huel ober ho mistri var an eskibien hag an dud a Iliz. Ober a reaz sevel kalz a ilizou nevez, ha nevezi kalz a re all dre he eskopti; kouenchou a zavaz ive d'al leanezed.

He vadelez evit ar beorien a oa ker braz ma tiouere kalz a draou evit gellout rei mañoc'h d'ezo Eun devez, eun intanvez ezomek a c'houlennaz an aluzen digantan, met an eskop santel n'en devoa ket eur guenneg varnan: lakât a reaz kercent he stol vras e kred, evit kaout eun dra benag da rei d'ezi.

Ar schismatiked kounnaret outan abalamour d'ar vad a rea, a glaske pell a oa an tu da lamet he vuez digantan.

Ar zant oc'h anaout, dre c'hras Doue, e tlie beza lazet dizale ganto, a lavaraz: « Va Doue, va enebourien a » glask va maro, kinnig a ran d'oc'h va buez a greiz » kaloun evit brasa mad hor mam zantel an Iliz. » Eun devez m'edo deut da gear Vitebsk, he enebourien a ziredaz a vandennadou da gelc'ha an ti ma rea he zisken ennan; o veza lammet en ti da glask Josaphat, e skojont gant he zervicherien. Ar zant, kercent ha m'ho c'hlevaz, a ziredaz d'ho c'haout, hag a lavaraz d'ezo gant dousder: « Va bugale, perak skei gant va zerviche- » rien: m'oc'h euz drouk ouzin, setu me dirazoc'h. » Ar schismatiked a zaillaz kercent varnan, hag ar merzer kalounek a gouezaz d'an douar, hanter-lazet; ober a reaz sin ar groaz en eur lavaret: « O va Doue! » hag e tremenaz raktal, d'an 12 a viz du euz ar bloaz 1623.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a zo bet tennet he vuez digantan, abalamour ma kare kement ar Pab, ha ma poanic kalz da ober d'ar schismatiked distrei d'ar guir Iliz. Na kaera maro! An Iliz a zo pried Jesus-Christ: he c'haret a zo eta karet mab Doue: mervel eviti a zo mervel evitan ive. Difenomp bepred Hor Mam zantel an Iliz enep ar gevier, enep an dud fall. Kemeromp skouer divar sant Josaphat, ha Doue hor c'huruno eun deiz en he varadoz.

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ DU

SANTEZ JERTRUD, GUERC'HEZ

(1264-1334)

Ar zantez-man, ganet e kear Eisleben en Allemagn, er bloaz 1264, n'e doa c'hoaz nemet pemp bloaz p'en em voestlaz da Zoue en eur gouent euz a Urz sant Beneat.

O veza evelse troet kein da blijadureziou ar bed-man, e renaz eno eur vuez santel, hag he brasa soursi a oa ober peb tra er guel a Zoue.

O veza m'oa aketuz da zonjal a zevri e guirioneziou ar relijion, he c'haloun ne zaleaz ket da veza douget da viret ar vertuziou kaera, hag abarz nemeur e savaz var an huella pazen euz ar zantelez.

Choazet evit beza superiorez d'an oad a dregont vloaz, e c'houarnaz he c'houent epad daou ugent vloaz gant eur furnez dispar; ker braz e oa he c'harantez evit reolen an Urz, ma teuaz dre he skouer da zantelât e berr amzer al leanezed a oa dindanni. Petra benag ma oa dre he renk mam ha mestrez an oll, he humilite a rea d'ezhi disken e renk ar re zistera hag ar re ziveza euz ar gouent. Klevet e veze aliez o lavaret e oa kaer ha bras

meurbed madelez Doue hag he drugarez, pa c'houzanve eur bec'herez eveldi.

Evit lakât he spered d'en em drei easoc'h a-ze varzu Doue, ar zantez a gastize he c'horf dre ar iun ha dre ar binijen. En em blijout a rea o sonjal dirak imach Hor Zalver, er poaniou garo en deuz divoasket evidomp e mare he Basion; ha pa 'z ea e harz an tabernakl, e sonje er garantez dispar en deuz diskouezet Jesus d'an dud er zakramant meulet ra vezo euz an Aoter: neuze an daelou a rede puill euz he daoulagad. Skriva a reaz meur a levr, lod evit maga an devosion etouez he leanezed, lod all evit deski d'ar gristenien hent ar guir zantelez. Klask a rea ive euz he oll galloud lakât ar bec'herien da zistrei da Zoue ha da jench buez, ha bez' e devoe an heur-vad da dema eun niver braz anezo divar hent an ifern.

Bez' e devoa eur garantez birvidik evit eneo keiz ar purkator; ober a rea bemdez eun dra benag evit ho sikour da baea ho dle, ha den na c'helfe niveri ar pedennou, an oberou mad a ginnige evit ho lakât kentoc'h a-ze da velet Doue d'ar baradoz. Jesus-Christ, evit digoll he zervicherez euz he c'harantez, en em ziskouezaz d'ezi meur a vech, hag a roaz d'ezi eun tanva euz eürusdet an env. Met ar zantez, en despet d'ar grasou dispar a roaz Doue d'ezi, a joumaz humbl atao, ne glaske nemet eun dra: gouzanv poan a-unan gant Hor Zalver stag ouz ar groaz.

Mervel a reaz er bloaz 1334, goude beza bet an heurvad da velet He Zalver benniget, ar Verc'hez Vari, sant Ian Avieler hag eur maread tud eüruz o tiskan euz an env evit dont da gere'hat he ene pur. Pa nijaz ene Jertrud d'ar baradoz, tud santel a velaz meur a ene o sevel euz ar purgator, evit mont d'he heul: meritou ar zantez o doa digoret dor ho frizoun, ha great d'ezo mont ganti d'an eürusted a bado da viken.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Jertrud en em voestlaz da Zoue azalek an oad a bemp bloaz. Dever ar vugale eo, pa deu skiant d'ezo,

adori Doue, da lavaret eo, he anaout evit ho C'hrouer hag ho mestr, hag evit-se kredi ennan, esperout ennan, hag he garet euz a greiz ho c'haloun. Met penaoz e raint-hi an draze, ma na glevont hano ebet euz a Zoue? Tadou ha mam-mou, deskit d'ho pugale kerkent ha ma tigor ho ententamant, ez euz eun Doue en deuz ho c'hrouet, boazit anezo abred d'he zouja, d'he bedi, d'he drugarekât evit he c'hrasou.

II. — D'an eil, santez Jertrud a oa soursiuz da bedi evit an anaoun; eveldi kasomp aliez betek eneo ar purkator an tanva euz hor pedennou, euz hon aluzennou.

AR C'HOUEZEKVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Maudez, Abad

Maudez a oue dekved krouadur eur roue bian euz an Irland, setu perak e oue konsakret da Zoue a vianik, rak he dud a oa kristenien euz an dibab.

Ar c'hrouadur a oue kaset abred d'ar skol gant me-nec'h guizieg ha santel, eno e teskaz ar skianchou a oa anavezet d'ar mare-ze, met deski a reaz dreist oll servi-cha mad an Aotrou Doue. Pa oue savet braz, na zonjaz ket distrei er bed evit klask plijadur hag henoriou e lez he dad, met reseo a reaz Urz kaer ar velegiach, en esper ren eur vuez santeloc'h hag ober muioc'h a vad d'an dud.

Maudez a oa ker mad da bedi, ma oue hanvet da Dad Abad, hag hen iaouank c'hoaz, met na joumaz ket pell en he vro.

Eur vosen euz ar re voasa a dagaz, en antzer-ze, an Irlandiz, hag an dud a varve dioc'h an druill. Tad ha mam ar zant a oue taget gant ar c'hlenved, he oll vreudeur hag he c'hoarezed a oue skoet ive, hag oll e varvjont. Na joumaz nikun beo e lez ar roue.

An dud a ziredaz neuze da glask Maudez en he leandi, ha da ginnig d'ezan ar gurunen a roue. Gant an da goll

he ene er bed, ar manac'h santel a respountaz: « Ho trugarekât a ran, met roit d'in, mar plij, eun nosvez d'ober va zonzj, ha vare'hoaz me ho kuelo adarre. »

Ar zant a joumaz hed an noz var zav, o c'houlen digant an Aotrou Doue, en he bedennou birvidik, pelât diouthan ar garg poumer a ginniget d'ezhan gant an henoriou brasa. He beden a oue selaouet, ha pa darzaz sklerijen an deiz, Maudez a oa ker guen ha ken louz he groc'hen hag hini enn den lor, e serr eur c'hlenved hir.

Pa 'z eaz dirak an dud a oa deut d'he glask, ar re-man a oue spountet ouz he velet; ha pa ziskleriaz d'ezo e kave guell choum manac'h eget beza roue, e leverjont d'ezan dioc'htu e rea mad. Sonjal a reant: « Pe seurt digemer a ve great d'comp gant hor c'henvroiz, ma tistrofemp d'ar gear gant eur roue lor? » En noz varlerc'h, klenved Maudez a dec'haz kuit ker buan ha ma oa deut, met ar zant a bignaz buan en eur vag gant sant Tudy, sant Botmael hag hiniennou all, evit tec'het diouz an henoriou.

Ar venec'h santel a zouaraz oll demdost da Lezardrieux, en eskopti Sant-Briek breman. Ar porz bian a oue taolet an heor ennan a oue hanvet ar Porz Benniget, abalamour d'ar zant.

Maudez a ieaz, da genta, da velet sant Tugdual, a oa eskop neuze er c'horn douar-ze a bez, an eskop a roaz galloud d'ezan da brezeg an Aviel el leac'h ma karfe. Goude beza sklerijennet, epad eun amzer, tud ar vro hag a oa guall zizesk var al lezen gristen, d'ar mare-ze, ar zant a ieaz da leandi sant Ruelin da ziskuiza.

Mont a reaz ac'hano, a benn eur pennad, d'ober he ermitach en eul leac'h distro, demdost d'an aod, var douar parrez Pleubian: eno e savaz lochen ha chapel.

C'hoant braz en doa da ren eno eur vuez kuzet, he unan gant Doue, met an dud divar dro a gavaz buan hent he ermitach. Ar zant, mad atao evit an oll, a gelenne an dud nec'het, a frealze an dud poaniet, a roe ar c'herzed d'ar re a oa seizet hag ar guelel d'ar re zall. Seulvui e

paree tud klanv, seulvui e tene re all var he dro, muioc'h mui bemdez.

Pa velaz ervad e teufe tud ha kalz tud da zistrans anezhan divar he bedennou en he ermitach, Maudez a dec'haz, eur vech all c'hoaz, da glask eul leac'h distro ha kuzet mad.

Kaout a reaz en dro-man eun enezen, pe gentoc'h, eur gour-enezen hanvet Brehat. Pa vez huel ar mor, Brehat a zo enezen, met pa vez izel ar mor, e c'heller mont heb bag betek enni, ne deo eta nemed eur gour-enezen. Brehat a oa goloet neuze a amprevaned louz, met ar zant a reaz d'ezo tec'het kuit.

An ermit a zavaz buan eul lochen hag a veler c'hoaz hirio, hag a zo hanvet fourn Maudez, da c'houde, e savaz eun orator. Tud a deuaz adarre d'he velet, setu ma oue savet lochenou all e kichen an hini genta: Maudez a renaz an oll var hent ar zantelez.

Diez e oa mont d'an douar braz, a oa eul leo ac'hano, da gere'hat dour dous, met ar zant a reaz toulla eur puns e kreiz an enezen, hag a reaz d'ezan rei dour, dre nerz he bedennou.

Goude beza bevet en enezen-ze meur a vloaz, ha roet skoueriou kaer d'he venac'h, Maudez a gouezaz klanv, a resevaz he zakramanchou, hag a varvaz en eur zellet ouz he grusifi.

An douar a zo e kichen he ermitach en deuz bet digant Doue vertuz da barea, avechou, euz klenvejou a zo: kemmesket e vez an douar-ze gant an dour a vez roet da eva d'ar re glanv.

Bez' ez euz, en eskoptiou Sant-Briek ha Kemper, eur maread chapelioù ha skeudennou en honor da zant Maudez.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz poaniet, hed he vuez, da dec'het araoù an henoriou, hag araoù meuleudi an dud. Daoust ha na glaskit ket beza meulet gant ar re all? Daoust ha n'en em veulit ket hoc'h unan, pa gav d'eoc'h n'eo ket mad aoualc'h an dud d'ho meuli? Barnet e vezimp goulskoude gant Doue, n'eo ket var meuleudi an dud eo.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Gregor, Den ar miraklou, Eskop

Ar zant-man, leshanvet Den ar miraklou, abalamour d'an niver braz a vuzudou en deuz great en he vuez, a oa ganet e kear Neosezaree, e rouantelez ar Pount guez-chall. Pinvidig a vadou an douar, Gregor a zilezaz he vro evit mont da gaout Orijeen, unan euz an Tadou gouisieka euz an Iliz; heman her gounezaz d'ar feiz kristen, hag ar zant a lakeaz doun en he spered ar c'homzou-man euz ar Skritur Zakr: « Petra dalv d'an » den gounit ar bed oll, mar teu da goll he ene ? » Distrei a reaz var eün d'ar gear da ranna he oll vadou etre ar beorien; da c'houde, ez eaz en eul leac'h distro, evit sonjal e Doue hag en he zilvidigez.

Doue a oa he lagad o para var he zervicher; ar brud euz he zantelez hag euz he skiant vraz a reaz ma oue choazet da eskop e Neosezaree. Tud ar gear-man a oa kazi oll paianed; met an eskop santel, dre he zouder hag he vadelez, a deuaz a benn da c'hounit kalonou an darn vuia anezo. Kelen a ouie en eun doare kaer. Eun dervez ma oa nec'het gant eur gentel, e pedas a vir galoun an Itroun Varia d'he zikour, hag ar Vere'hez en em ziskouezas d'ezhan gant sant Ian Avieler, hag a reaz d'an abostol muia karet kelen an eskop santel. Ar gristenien a zelaoue gant dudi komzou ho fastor benniget.

Gregor a zo bet leshanvet Den ar miraklou er bloavez ma teuas ar vosen vras da skuba eur maread tud en oll broiou euz ar bed. Kerkent ha ma 'z ea ar zant en eun ti hag a oa tud klanv enghan, ar c'hlenved a dec'he.

Pa velaz e oa kresket kalz niver ar gristenien e Neosezaree, ar zant a c'hoanteaz sevel eun iliz evitho. Choaz

a reaz evit-se eul leac'h euz ar re gaera; met o velet e oa ar blasen eun tamik re stris, leun a fizians e Doue, e pedaz anezan da gas pelloc'h eur menez a oa var he hent. Doue a zelaouaz he beden: ar menez a jenchaz plas hag en em dennaz larkoc'h.

Gregor a laboure ive da lakât an unani da ren etouez he gristenien. Daou vreur ne c'hellent ket en em glevet divar benn eul lenn a oa etrezo. Ar zant, o velet ne c'helle ket ho lakât d'en em unani, a bedaz Doue, eun nosvez, euz a greiz he galoun: antronoz al lenn a oa dizec'het, hag an daou vreur, o velet ar burzud, a deuaz raktal d'en em glevet.

He garantez evit an oll a oa ker braz, ma ne ouie ket nac'h ouz eun den he c'houlenn. E kichen kear e oa eur ster hag a rea, dreist oll er goanv, kalz gaou ouz an douarou a oa tu ha tu d'ez, dre ma vezent goloet gant an dour beuz. An dud divar dro, leun a fizians e peden-nou ar zant, her pedaz da viret hiviziken anezo diouz eur seurt darvoud. An eskop karantezuz en devoue truez ouz an dud keiz-se, ha goude beza eun devez sanket he vaz var ribl ar ster, e tifen outi, en han' Doue, golo hiviziken an douarou divardro. Ar ster a zentaz, hag ac'houdevez, an dour beuz ne zavaz mui var an douarou.


Abarz mervel, e c'houlennaz ped paian a joume c'hoaz e kear Neosezaree. « Seitek » a respountaz unan benag. « Done ra vezo meulet » eme ar zant, ne oa nemet sei- » tek kristen, pa oun bet lakeat da eskop. » Hag o veza pedet Doue da rei sklerijen d'ar seitek paian-ze, e rentaz he ene d'he Grouer, pa oa o ren he zek vloaz ha tri-ugent, er bloavez 270.

SONJOMP ERVAD :

Kear Neosezaree ne oa enni koulz lavaret nemet paianed, pa zigouezaz sant Gregor; staga a reaz d'al labour, hag abarz mervel, tud ar gear, nemet seitek paian, a oa deut da veza kristenien stard en ho feiz.

Na braz eo joa eur mestr, nag a leac'h en deuz da gaout fizians p'en deuz roet da Zoue, evel ar zant-man, kement hini

a zo en he garg. Nag a joa evit eun tad hag eur vam, nag a fizians a c'hellont da gaout m'o deuz kelennet mad ho bugale ha kement o deuz galloud varno, m'o deuz ho distroet divar hent an ifern, hag ho lakeat a nevez var hent ar baradoz!



AN TRIVACH'VED DEVEZ A VIZ DU

Dedi Ilizou Sant Per ha Sant Paol, e Roum

Sant Per ha sant Paol a oue koundaonet gant Neron ha lakeat d'ar maro er meinez devez, met dispartiet e ouent an eil dioc'h egile; var leac'h an disparti ez euz bet savet eur japelik. Sant Per a oue staget ouz eur groaz, he benn d'an traon, var menez ar Janikul; sant Paol a oue dibennet gant ar c'hleze, var 'n hed eun hanter-heur euz mogeriou Roum.

Korf sant Per a oue sebeliet ha lakeat en eur bez marbr guen, dindan menez ar Vatikan; tri bloaz var 'n ugent goude, ar Pab sant Anaklet a reaz sevel eur japel el leac'h-se. Relegou prins an ebestel a zo choumet eno abaoue, nemet int bet savet eur vech, ha kaset e savete dindan an douar asamblez gant relegou sant Paol, e **Katakomb** sant Sebastien. Ar Pab sant Korneill a gasaz ar relegou santel el leac'h m'edont bet lakeat da genta, hag ar roue Konstantin a zavaz eun iliz kaer var bez pep hini euz an daou Abostol.

Iliz sant Per a ieaz da fall prest goude ar bloaz 1400; er bloaz 1450 e oue staget d'al labour evit sevel eun iliz kaer, braz ha pinvidik aoualc'h evit prins an ebestel; achuet eo bet er bloaz 1626.

Ugent Pab a reaz labourat var an iliz-se, an artizaned a zo bet renet gant an dud desketa var al labourou braz: Bramant, Raphael, Mikel-Anj, Maderna, Bernin; an iliz

a zo brasa ha souezusa hini a zo er bed, koustet eo bet 250 million, ha golo a ra, gant he mogeriou, ouspenn pemp devez arad.

E kaloun an iliz, doun en douar, ema korf an aotrou sant Per: 17 delez, sklerijennet noz deiz, a ra d'an dud disken tost d'ar c'horf; gant pebez feiz birvidik e peder eno! N'euz nemet ar Pab, pe ar re o defe bet aotre diganhan, hag o defe guir da lavaret an oferen ouz an aoter a zo bet savet a zioc'h ar relegou santel-ze.

E kichen an aoter vraz, e veler imach sant Per azezet var he gador o rei he vennoz d'an dud: bizied troad ar zant a zo uzet gant muzellou ar bardonerien a ia da bokat d'ezan.

Tro var dro d'ar c'hreiz, e lenner, e lizerennou braz, komzou Hor Zalver da Ber: « Te a zo Per (**mean**), ha » var ar mean-ze me a zavo va Iliz, ha galloud an ifern » ne vo biken treac'h d'ez. » Var ar pilierou braz, ema skeudennou doktored an Iliz, izelloc'h ema skeudennou an oll zent braz o deuz savet eun Urz benag: sant Beneat, sant Dominik, sant Fransez Assis, sant Ignas, sant Visant a Baol ha kalz a re all: renta a reont testi int deut da veza sent o veza m'int choumet a-unan gant sant Per, ha gant ar Pabed o deuz bevet var he lere'h.

Kalz relegou merzerien a zo henoret en iliz-se; guelet a reer enni ar gador m'eo bet azezet sant Per varni evit kelen ar gristenien genta.

Dedi Iliz sant Per a zo bet great, d'an 18 a viz du euz ar bloaz 1626, gant ar Pab Urban VIII.

Korf sant Paol a oa bet lakeat en eur bez tost d'al leac'h m'oa bet dibennet: Lusil, eur gristenez euz an noblanz huella, e doa kalz douar eno. Savet e oue da c'houde, en amzer an impalaer Konstantin, eun iliz euz ar re gaera da c'holo ar relegou santel-ze: choumet eo pell hag hir en he zav. Devet eo bet er bloaz 1826 gant an tan goall.

Gant sikour kristenien vad ar bed oll, an iliz a zo bet savet a nevez, kaeroc'h eget arok. Ar pilierou a zo great gant marbr pinvidik dreist; hag azioc'h, e veler patrom

an oll Pabed a zo bet azezet var gador sant Per, abaoe sant Per he-unan betek ar Pab a zo breman.

Al labour var an iliz a badaz meur a vloaz, konsakret e oue d'an 10 a viz kerzu euz ar bloaz 1854, dirak an oll eskibien euz ar bed deut da Roum da zelaou an Tad Santel ar Pab Pi IX o tiskleria eo bet ar Vere'hez Vari, konsevet Dinam.

SONJOMP ERVAD :

Doue a ra renta henor, er bed-man zoken, d'ar re a zo bet he vir zervicherien. Ar zent brasa a zo bet o pedi var bez an ebestel zantel; ar bardounerien a ia bep bloaz da Roum a villerou hag a gant millerou; eskibien ar bed oll a zo red d'ezo mont bep er mare, da c'houlen sklerijen ha nerz digant an ebestel eüruz sant Per ha sant Paol, ha da reseo aliou an hini a zalc'h plas sant Per var an douar. Perak e teu ar gristenien katholik da renta kement a henor d'an daou baostol braz? Abalamour m'int gallouduz er baradoz, abalamour m'o deuz grasou kaer da rei d'ar re a zo devot d'ho fedi. Pedomp eta anezo gant fizians.

AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ DU

Santez Elisabeth a Hongrii

(1207-1231)

Ar zantez-man, ganet er bloaz 1207, a oa merc'h da Andre, roue an Hongrii; eviti da veza bet savet en eur palez euz ar re binvidika, ne oa ket troet gant madou ar bed hag he blijadureziou; met karet a rea Doue hag ar beorien.

O veza dimezet da Loiz, duk a Durinj, ne zilezaz ket evit-se he deveriou e kenver Doue; e kreiz eürusted an douar, ne ankounac'heaz ket deveriou he stad; hag e

choumaz ken humbl ha ma oa devot ha santel. Bemnoz e save da bedi, hag aliez e kastize he c'horf dre binijen-nou braz, he modesti en he guiskantant a reaz kement var an itrounezed a veze digemeret en he lez, ma teuz meur a hini anezo da lezel a gostez ho dillad kaer evit heuill he skoueriou.

An hini a gar Doue en deuz ive en he galoun eur guir garantez evit he nesa, hag en deuz plijadur oc'h ober vad d'ezan; setu perak, goude Doue hag he fried, Elisabeth a gare c'hoaz an oll, hag ispisial ar beorien hag an dud mac'haniel. Epad eur gernez a gouezaz var ar vro, ar zantez a ingalaz etre an dud ezomek kement guen-neg a oa en he falez, hag a roaz urz da dud he lez da zigeri d'ar beorien he grignoliou ed: kounta a reer e vage betek nao c'hant paour bemdez. Offiserien ar palez a lavaraz eun devez d'an duk: « Prins, an dukez ho kaso » da baour. — Petra, emezan, guerzet e deuz douarou » an dukach? — Oh! nan, emezo. — Ma! eme an duk, » list anezi d'ober he fenn, da rei ar pezh a blijjo d'ez; » he aluzennou a denno bennoz an Aotrou Doue var- » nomp. »

He fried o veza deut da vervel, Elisabeth a oue taolet er meaz euz ar palez gant he breur-kaer; pevar grouadur e devoa, ha ne gavaz ken lojeiz evito hag eviti he-unan, nemet eur c'hraou moc'h! Ar brinsez a c'houzan-vaz heb en em glem, hag a lavaraz gant an den santel Job: « Va Doue, danvez o poa roet d'in, ho lamet oc'h » euz diganen, ra vezo great ho polontez santel. » Kemeret a reaz sae ar binijen e Trede Urz sant Fransez, hag ec'h en em lakeaz da entent ouz ar re glanv, ar re ezomek; mont a rea d'an hospitaliou evit servicha an dud keiz a veze dastumet enno: rei a rea d'ezo da zibri, ober a rea ho gueleou, ha pokat d'ho daouarn ha d'ho zreid. Eun devez m'edo o kempen hag o louzaoui eun den lor, Hor Zalver he-unan en em ziskouezaz d'ez; stag ouz ar groaz, dindan furn ar c'hlanvour.

Erfin, skuizet ore he labourou hag he finijennou, e rentaz he ene kaer d'he C'hrouer, d'an 19 a viz du euz ar bloaz 1231, d'he fevar bloaz var 'n ugent. Klevet e

oue kercent an elez o kana en he hano: « Great em euz » fae var draou ar bed-man, dre garantez evit Jesus-Christ, va mestr ha va Doue; Hen eo am euz klasket, » am euz karet, ennan ema va oll fizians. »

Ar miraklou braz a c'hoarvezaz var bez Elisabeth a reaz d'ar Pab Gregor IX he lakât e renk ar zentezed, pevar bloaz hebken goude he maro.

SONJOMP ERVAD :

I. — Santez Elisabeth e deuz bet da c'houzany dismegans an dud. Arabad d'comp fallgalouni ma vezomp disprijet, rak ne deo souez ma veler er bed-man, ar re vad er boan hag evel dilezet, an dud fall eüruz hag henoret: ar re-man o deuz ho digoll ama; ar rum all, er c'hontrol, na vezo marteze digollet nemet er baradoz.

II. — Ar zantez-man, e kreiz trouz ha safar ar bed, a vire gant evez oll deveriou he stad. N'euz forz e pe seurt renk oc'h bet lakeat gant an Aotrou Doue, e c'hellit beza devot, mar kirit.

III. — Ar beorien a oa mignouned Elisabeth. Bezit mad ouz ar paour; an aluzen a zo al'houez ar baradoz.

AN UGENTVED DEVEZ A VIZ DU

SANT FELIX A VALOA

(1127-1212)

Var a lavar hiniennou euz an historiou koz, Felix, ganet e Frans, a oa euz a ouen ar rouaned; abred kaer en devoue eur garantez tener evit ar paour.

Araok an oad a skiant zoken, e felle d'ezan redet he-unan da dal an or evit rei an aluzen. Nebeut goude e oue aketuz da zastum ar pezh a joume euz he zilere'h

hag euz a zilere'h ar re all goude ar prejou, evit ho rei d'ar vugaligou baour. Miret a rea zoken evito ar peb guella, koulz lavaret, euz ar pezh a veze bet servichet d'ezan. Rei a reaz meur a vech, d'ar beorien, he zillad he-unan, ha n'oa ket c'hoaz dek vloaz, pa zaveteaz he vuez d'eun torfetour a oa varnez beza barnet d'ar maro, en eur lavaret e teuje an torfetour-ze da jench buez: ar pezh en em gavaz guir a boent da boent.

Goude beza tremenet he iaouankiz en eun doare ker santel ha ker vertuzus, e sonjaz kuitât ar bed evit mont enn eul leac'h distro benag da veva he-unan gant Doue. Da genta e falvezaz gantan reseo an Ursiou sakr evit pellât diouz an trôn, rak o veza ma 'z oa unan euz ar re dosta d'ar Roue, e c'helle beza galvet da reseo ar gurunen. Beleget e oue eta, hag hep dale ez eaz en eul leac'h distro ha gouez; eno e tremene he amzer o pedi, o sonjal hag o kastiza he gorf dre ar binijen.

En doare-ze en doa great he zonzj da dremen he vuez, pell diouz ar bed ha pell diouz an dud, met eun doktor iaouank euz a Baris, hanvet Ian Matha, o veza klevet hano euz a vertuz Felix, a oue poulzet gant Doue da vont da veva gantan en he ermitach, en eskopti Meaux.

Abenn eun nebeut bloaveziou, Ian Matha a ziskleriaz da Felix ar pezh a oa digouezet gantan epad m'edo o lavaret he oferen genta: « Da vare-ar gorreou, emezan, » e veliz eun eal guisket e guen gant eur groaz ruz ha » glaz var he zillad, hag e kichen an eal, sklaved kar- » get a jadennou poumer. Sonjal a ran aliez aboue er » gaptived keiz-se, hag e karfen ho zavetei. » Felix hag he goupagnoun a ententaz neuze, dre ar burzud-se, e oa bolontez Doue e savjent eun Urz nevez a venec'h evit prena ar gristenien laeret gant an Turked, ha raktal ez ejont da Roum d'en em glevet var gement-se gant ar Pab Innosant III. Ar Pab a viskaz da bep hini anezo eur zae ven hag a oa emmi eur groaz ruz ha glaz var an araok, henvel ouz an hini en doa guelet Ian Matha var dillad an eal. Abalamour d'an tri seurt liou-man, ar Pab a hanvaz an Urz nevez, Urz an Drindet Sakr, evit tenna ar gaptived euz a dre zaouarn an Turked.

Felix, distroet e Frans, a lakeaz sevel eur gouent vraz el leac'h m'oa bet gant he goumpagnoun oc'h ober he ermitach, met red e oue d'ezan heb dale, lakât sevel kouentchou all dre ar vro, rak niver ar venec'h a greske a zeiz da zeiz.

Klevet on deuz lavaret aliez, e vez digollet, er bed-man zoken, ar re a vez devot d'ar Vere'hez Vari: setu ama ar pezh a reaz ar Vere'hez evit rekoumpansi sant Felix euz he zevosion dener eviti. Eun nozvez, derc'hent Gouel Maria-Vengolo, pa oue deut an heur da vont da gana Matinezou d'ar japel, ar venec'h all euz ar gouent a joumaz oll kousket dre eun taol euz a brovidanz Doue. Met Felix, dihun mad ha savet d'ar mare merket, a ieaz d'ar japel. O burzud! Petra vel neuze! Ar Vere'hez Vari e kreiz ar c'heur, ganti sae ven Urz an Drinded, hag en dro d'ezi eur vanden elez guisket ive e guen! Ar zant a gemeraz he blas en ho zouez, hag ar Vere'hez o veza kanet da genta, an elez, Felix hag hi a ganaz an offis penn da benn. Hag evel pa vije bet galvet dre ar burzud-se da vont da gana meuleudiou an Aotrou Doue d'ar baradoz, eun eal a ziskleriaz d'ezan e tlie mont heb dale da gemeret evit atao he blas etouez an elez. Felix a varvaz e peoc'h, e miz du euz ar bloaz 1212: ren a rea he bemp bloaz ha pevar ugent.

SONJOMP ERVAD :

Sant Felix, azalek an oad tenera, a oue leun a drugarez evit ar paour, ha betek he huanad diveza ne ehanaz da brezeg d'he genvreudeur ar garantez hag ar vadelez e kenver ar beorien hag ar gaptived. Kemeromp eta skouer var ar zant-man, kristenien, greomp aluzen d'ar paour: n'on deuz ket doare kaeroc'h da drugarekât Doue euz an oll vadelez en deuz evidomp.

AR C'HENTA DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

AR VERE'HEZ KASET D'AN TEMPL

Ar gouel hirio a zigas da zonz d'eomp euz an deiz ma 'z eaz sant Joachim ha santez Anna da dempl Jerusalem, evit kinnig da Zoue ha lakât en he zervich Mari, ho merc'h.

Tad ha mam ar Vere'hez, o velet e oant koz ha n'o doa krouadur ebet, a bedaz kalz hag a bromettaz da Zoue, ma roje d'ezo eur bugel, hen lakjent en he zervich en templ: ar Vere'hez Vari a oue roet d'ho fedennou hir ha kalounek.

Koant evel an deiz, sentuz evel eun eal, Mari a rea joa hag eürusdet he zad hag he mam. En despet d'ar garantez tener o devoa evit ho merc'hik, an daou zant o doa dalc'het sonj mad euz ar ger o doa roet d'an Aotrou Doue. Pa oue ar Vere'hez tri bloaz, e oue kaset gantho da dempl Jerusalem.

Mari a oue digemeret gant ar beleg euz a dre zaouarn he zud, ha lakeat etouez ar merc'hed iaouank a veze savet en Templ gant mestrezed santel, evit deski pedi devotoc'h, servicha Doue ha labourat mad. Evel m'oa bet Mari, dre eur burzud dispar, diouallet diouz ar pe-c'hed orijinel, ha ma oa kelennet gant ar Spered-Santel, ec'h en em roaz oll en deiz-ze da Zoue evit biken; rei a reaz d'ezan he c'haloun, he spered, he c'horf gant he oll skianchou, ha kerkent e reaz eur veu ha n'oa bet great gant merc'h all ebet etouez ar Juzevien, ar veu da jom bepred guere'hez.

En templ e tremene eul loden vraz euz he amzer o pedi, o kana meuleudiou an Aotrou Doue, e teski her e'haret bemdez muioc'h-mui. O lenn ar Skritur-Sakr e teskaz reketi ma tiskenfe buan euz an env ar Zalver a

dlie savetei ar bed; gant an dud santel ec'h huanade bemdez varlerc'h he zonedigez etouez an dud.

Eno ive e rea al labourou a zelle ouz ar merc'hed euz he oad. Eur blijadur e oa eviti deski neza, griat, ober stam, evit ma c'helje ober ar guiskamanchou kaer a veze douget gant ar veleien a zerviche en Templ. Ober a rea ive pallemou arc'hantet hag alaouret, evit ti an Aotrou Doue. Hed he buez, en he oll labourou, ar Verc'hez ne gollaz morse ar guel a Zoue. He flijadur vrasa a oa goulskoude klevet komz a Zoue hag euz buez an dud santel o doa bevet en he raok. He c'haloun a veze neuze evel bezet en eur mor a laouenedigez.

Var dro an oad a bemzek vloaz e rankaz mont euz an Templ, e leac'h ma rene eur vuez ker santel. Evit ober bolontez Doue penn da benn, e timezaz da Joseph, en devoa great evel di veu da jom bepred guere'h.

SONJOMP ERVAD :

Ar Verc'hez, sklerijennet gant ar Spered-Santel, en em roaz oll da Zoue d'an oad a dri bloaz, pa ne anavez ket c'hoaz ar vugale all an drouk diouz ar mad. Eüruz ar vugale en em ro da zervicha Doue kerkent ha ma 'z int gwest d'hen anaout. Doue ho bennigo hag ho sikouro da zerc'hel he c'houre'hemennou; bemdez ez aint larkoc'h-larka var hent ar zantelez. Eüruz ar gerent a laka a vianik doujans Doue e kaloun ho bugaligou, ha ne argilont ket evit ho rei da Zoue, pa deu d'ho goulou en he zervich. Mari a ro en deiz-man da Zoue kement e deuz; ne glask digarez ebet evit miret eun dra benag d'ez i he-unan; en em rei a ra oll. Ha ni, pa c'houlou Doue diganeomp hor c'haloun, hag hen rei a reomp oll d'ezan? Ha ne glaskomp ket hen ranna etre Doue hag ar bed, oc'h ankounac'hât ne c'hellomp ket servicha daou vestr asamblez?

Mari a zervich Doue evit atao. Ha ni, goude beza lavaret da Zoue e vezimp oll d'ezan, ped guech oump eat eneb hor ger? Goude beza lavaret e troomp evit atao kein d'ar pec'hed, e vezomp diskaret gant an distera tentasion; e leac'h tec'het araok ar pec'hed, e redomp var he lerc'h; goude beza lavaret e talc'himp atao Jesus en hor c'haloun dre ar gomunion great aliez, e choumomp miziou heb daoulina ouz

an daol zantel. Hirio da viana, nevezomp evit mad, ar bro-mesa on deuz great ken aliez, da drei kein evit atao d'an drouk-spered, evit servicha Jesus-Christ hebken.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Santez Sesilia, Guerc'hez ha Merzerez

Ar zantez-man, ganet e Roum, en amzer an impalaer Marc-Aurel, a oa a lignez huel; bez' oa en he iaouankiz eur plac'h vertuzuz ha devot meurbet: he respet evit komzou Doue a oa ker braz, ma touge bepred var he c'halon leor an Aviel; ober a reaz abred veu da jom atao guere'hez.

Eun dijentil iaouank, he hano Valerian, pinvidik ive, met euz pinvidigez an douar hebken, rak paian e oa, a c'hoanteaz he c'haout da bried; kerent Sesilia a lavaraz ia eviti. Ar vere'hez iaouank, o klevet kement-se, a reaz he oll galloud evit ma 'z afe he zud eneb ho ger, met plega a rankaz. Pa z' eo guir an dud ne zelaouent ket anezi, ec'h em erbedaz ouz Doue; iun a reaz epad tri devez, guiska a reaz eur porpant reun, ober a reaz da Zoue ar beden-man: « Gouzout a rit, o va Doue, em euz » roet deoc'h va c'horf, va c'haloun ha va ene; va zud » a fell d'ezo va rei en despet d'in da Valerian, grit, me » ho ped, ma choumin bepred guere'hez, evit miret va » c'hurunen. » Doue a zelaouaz peden he zervicherez.

Da zeiz an eured, e oue koan vraz diouz an abardaez, hag epad ar goan-ze, kan ha muzik. Ar plac'h nevez a gane ive e goled he c'haloun a unan gant an elez: « Va » Doue, emezi, grit ma choumin bepred guere'hez. » Evit digas da zonzj euz ar c'han-ze ken dudiuz, eo bet lakeat ar zantez da batrounez ar ganerien.

Pa ouent ho daou e kampr an dud nevez, Sesilia a

lavaraz d'he fried : « Eun dra am euz da lavaret d'eo'e'h, » va mignoun, Doue en deuz roet d'in eun eal evit di- » fenn va guere'hdet; ma c'hasantit e choumfen guer- » c'hez, c'houi ive o pezo ar memez eal d'ho tifen. » Valerian a respountaz : « M'em beuz an heur vad da » velet an eal, n'ez in ket eneb d'eo'e'h. — Her guelet » a roet, emezi, met red eo d'eo'e'h da genta kredi e Jesus-Christ, ha reseo ar vadiziant. » Valerian a lavaraz ia, hag ar zantez henchaz he fried betek ar Pab Urban.

Ar Pab, abalamour ma reat goall vuez d'ar gristenien, a veve dindan guz; kelen a reaz Valerian var guirioneziou brasa ar relijion, hag e roaz d'ezan ar vadiziant. An den iaouank a zistro d'ar gear, laouen hag eüruz, hag a bign da gampr he bried. Petra vel? Sesilia var he daoulin o pedi, hag en he c'hichen eun eal kaer ha ske-duz. An eal a lakeaz eur gurunen var benn pep hini euz an daou bried, hag a lavaraz d'ezo : « Setu aze diou gu- » runen deut ganen euz liorzou ar baradoz, taoler a » raint eur c'houez vad dudiu, met ne vezint guelet » nemet gant an dud pur ha chast. Ha breman, c'houi, » Valerian, abalamour m'oc'h euz diskouezet kement a » respet d'ho pried, Jesus a roio d'eo'e'h ar goulen a » reoc'h d'ezan. » Valerian, devet he galoun gant eur guir garantez, e leac'h sonjal e madou hag henoriou an douar, a lavaraz : « Eur breur am euz, unan hebken, pli- » jet gant Jesus rei d'ezan ar feiz am euz. » He beden karantezuz a oue selaouet, breur Valerian a oue kente- liet gant ar Pab Urban, da badezet : prestik goude, an daou gristen nevez a skuillaz ho goad evit ar feiz.

Sesilia a zebeliaz ho c'horfou santel gant respet, hag a rannaz etre ar beorien ar peb brasa euz he danvez, rak sonjal a rea n'e doa mui pell da veva. Ar gouarner Almakiuz a reaz taoler anezi er prizoun, hag a glaskaz ober d'ezi nac'h he feiz, met ar vere'hez iaouank a oue treac'h d'ezan. Almakiuz ne gredaz ket barn Sesilia da c'houzanv ar maro dirak an oll, rak he zud koz d'ezi a oa bet brudet etouez quella difennourien Roum epad hir amzer; klask a reaz eta mouga ar gristenez kalou-

nek, oc'h ober tan braz dindanni, en he zi; met ar zantez n'e devoue drouk ebet, daoust ma choumaz eur pardaez hag eun nozvez e nerz eun tan spoutuz.

Neuze ar gouarner a roaz urz d'he dibenna en he zi. Koueza a reaz ar vere'h santel, d'an trede taol boue'hal a resevaz var he gouzoug; mervel a reaz tri devez hebken divezatoc'h, goude beza roet he zi d'ar pab, evit ober eun iliz anezan. Korf ar zantez a oa evel ma vije nevez-mar, p'eo bet savet euz ar bez, er bloaz 1599.

SONJOMP ERVAD :

Da genta, santez Sesilia a boaniaz da c'hounit he fried da feiz Jesus-Christ. Ar gristenien a dle beza guir ebetel; gounit eneo da Zoue, na kaera labour! na pinvidika eienen a veritou!

D'an eil, ar zantez-man a viraz he c'haloun pur ha dinam, en despet d'he zud. Ar burete a zo unan euz ar vertuziou a blij muia d'an Aotrou Doue: miromp eta anezi gant ar brasa evez.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

SANT KLEMANT, PAB HA MERZER

Sant Klemant a zo bet an trede Pab goude sant Per; beva a rea dija en amzer sant Per ha sant Paol. Sant Paol a skrive, en unan euz he liziri e oa merket hano Klemant el leor a vuez; ne c'helle ket ober brasoc'h meuleudi euz he zantelez.

Ar zant-man a labouraz gant ar Pabed kenta da c'hounit eneo da Jesus-Christ. Ne zelle nag ouz poan nag ouz skuizder pa veze menek da sklerijenna ar baianed, ha d'ho digas da dreid Hor Zalver. O veza m'oa eun den helayar, e c'houneze kalz paianed d'ar feiz;

gounit a rea evelato muioc'h a eneou da Zoue dre he zousder hag he zantelez, eget dre he gomzou renket kaer.

Goude m'oa bet savet d'ar garg a bap, e labouraz e'hoaz gant muioc'h a aked evit skigna ar feiz en oll broiou euz ar bed. Hor bro a dle beza dreist-oll leun a anaoudegez vad evitan, rak digaset en deuz sant Denis ha kalz beleien kalounek, da vleina hon tud koz var hent ar baradoz.

Dre he liziri hag he brezegennou, e teue kement a eneou da anaout ar guir Doue, ma choume goullou templou an doueou faoz. Leun a gounnar, beleien an idolou a e'houennaz digant an impalaer Trajan lakât Klemant d'ar maro. Trajan a reaz da unan euz he offiserien gullet pe seurt buez a rene ar zant. Goude beza great an enklask, e velaz e oa distag he galoun diouz oll draou an douar, ha n'en doa ken ioul nemet da ober vad d'an oll. Goulskoude, gant aoun da zisplijout d'ar baianed, Trajan her e'houndaonaz da vont da veva d'ar C'hersonez, eur vro pell diouz Roum, en tu all d'ar Mor Du.

Ar pap santel a gavaz eno daou vil gristen kaset ive euz ho bro abalamour d'ho feiz, ha koundaonet da denna mein marbr euz ar mengleuziou.

Komzou ha bennoz ar pab santel a roaz d'ezo eun nerz nevez e kreiz ho foanion kalet. Diosa ma kavent eo abalamour d'an dienez a zour; mont a rankent d'her e'here'hat var ho diouskoaz diou leo ae'hano, daoust ma vezent skuiz maro gant ho labour all. « Daoulinomp oll, » eme ar zant eun devez, ha pedomp madelez Doue da » gaout truez ouzomp. »

Epad ma pedent, Klemant a vel eun oan var eun dorgen, o skei an douar gant he droad. Ar zant a gerz buan beteg eno, hag o veza roet eun taol pal, a vel eun eienen o tarza.

Dirak eur seurt burzud, an dud keiz a gemeraz eun nerz nevez. Ar baianed ho-unan, o velet ar feunteun burzuduz, a drugarekea ar zant. Neuze e komzaz d'ezo euz ar guir Doue, krouer an env hag an douar, hag e berr amzer ne gavet nemet kristenien nevez kant leo

tro var dro, pa 'z eo guir en eur bloaz hebken e oue savet er vro penzek iliz ha tri-ugent. An Impalaer, o klevet kement all, a ieaz en egar; kas a reaz unan euz he offiserien da gregi er pab santel, gant urz d'hen taoler er mor, eun heor ouz he e'houzoug. He verzerenti a erruaz vardro kant vloaz goude donedigez Hor Zalver.

Meur a gant vloaz divezatoc'h, evel m'eo merket e buez sant Syrill ha sant Method, relegou ar zant a oue digaset da Roum, en amzer ar Pab sant Nikolas, ha lakeat en iliz sant Klemant.

SONJOMP ERVAD :

An impalaer Trajan a gasaz sant Klemant pell diouz Roum, gant aoun na deuje, dre he brezegennou, niver ar gristenien da greski er gear-ze; met an den a zo bervelet pa na vez ket Doue a du gantan. Ar zant, kerkent ha m'oue digouezet er C'hersonez, a lakeaz muioc'h a baianed da gredi er guir Doue, eget n'en devije great e Roum. Pep tra a dro mad evit silvidigez ar re a gar Doue. Resevomp atao gant levenez, ar vad pe an drouk a erru ganeomp; dont a reont a berz Doue, hag Hen a oar, guelloc'h evidomp, petra zo talvoudusa evit hon ene.

AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Sant Ian ar Groas

(1542-1591)

Ar zant-man, ganet er Spagn, a gollaz he dad abred, hag a oue digemeret, d'he vloaz var 'n ugent, en eul leandi euz a Urz Karmez. D'ar mare-ze, reolen menez'h Karmez a oa bet soupleat kalz, met ar zant a heuillaz anezhi penn da benn, evel m'oa bet douget gant ar venec'h kenta euz an Urz.

Pa oue **profezet**, Ian a c'houlennaz, dre humilite, beza Frer ha netra ken, met ar zuperioed a lavaraz d'ezhan: « Studia a reot evit reseo Urz ar velegiach, rak en doare-ze, e reot muioc'h a vad d'an eneo. » Ar zant a blegaz, hag a achuaz he studi: beleget e oue, ha divar neuze, na baouezaz da drugarekât an Aotrou Doue euz ar c'hras kaer-ze. Lavaret a rea an oferen gant devoision eun eal.

Santez Thereza a heuille neuze, e kouent Avila, reolen genta Urz Karmez. Goulenn a reaz digant he Zupe. rioried rei d'ezhi an Tad Ian ar Groaz evit he c'hoves hag he ren var hent ar baradoz, ha mennoz ar zantez a oue sevenet. Doue a roaz sklerijen da Ian ar Groaz evit ren al leanezed santel a oa neuze e kouent Avila gant santez Thereza, gloar Urz Karmez, hag a reaz d'ezan skriva leoriou euz ar re gaera. Al leoriou-ze a zo eur sklerijen evit an doktored hag ar veleien desketa var lezennoù ar zantelez, rak diskleria a reont ar grasoù skuillet gant ar Spered Santel en eneoù galvet da vale var hent an devoision huella. Eur sklerijen gaer int bet, en hon amzer, evit santez Thereza ar Mabik Jesus.

Abalamour ma rea an den santel pinijennou kalet ha ma c'heuille hent ar guir zantelez, rak iun a rea aliez ha ne gouske nemet diou pe deir heur bemnoz, Doue a reaz d'he ene saouri meur a vech, epad he vuez, eul levezenez dispar; avechou evelato, kaer en deze pedi, ne zante plijadur ebet o sonjal en Aotrou Doue. Guir eo, boaz e oa da c'houlenn digant Hor Zalver tri zra: « Da genta, arabat eo e chomfen eun dervez leun heb gouzanv eur boan benag; d'an eil, na garfen ket beza Superior pa deuo ar maro d'in; d'an trede, grit d'in mervel dianavezet ha disprijet gant an dud. » An Aotrou Doue a roaz d'ezhan he c'houlenn, hag abalamour ma oa distag kaloun ar manac'h santel diouz plijadureziou ar bed, Doue a gomzaz outhan avechou evel ma komz eun den gant he vignoun.

Enn devez, Ian en doa pedet ker kalounek ma oue douget a spered betek er baradoz. Pa oue deut ennan he-unan, daoulinet atao dirak he grusif, Christ ar groaz

a gomzaz outhan dre vuzud: « Ian, emezhan, pe seurt digoll a c'houlennet evit ar poaniou e peuz divoasket evidoun?

— Gouzanv poaniou all, ha beza disprijet evidoc'h, » eme ar zant. Ar zont euz komzou Hor Zalver benniget a roe, da c'houde, nerz d'ar manac'h santel, e kreiz an trubuillou brasa.

D'ar guener 13 a viz du 1591, an den santel a resevaz he zakramanchou diveza, hag a c'houlennaz, dioc'h ar pardaez: « Ped heur eo? — Nao heur, a respountaz unan euz he Vreudeur. — Teir heur am euz c'hoaz da jom, » eme ar zant neuze.

Da unnek heur hanter, e savaz var he c'hoazez, en he vele, brao ha krenv da velet, hag e lavaraz: « Galvit an oll Vreudeur ama. »

Selaou a reaz neuze unan euz an Tadou o lenn eur gentel tennet divar ar Skritur Zakr; da c'houde, e roaz he vennoz diveza d'an oll venec'h. « It da zoun evit ar Matinezou, emezan d'ar Frer karget da zoun ar c'hloc'h, rak deut eo ar mare. »

Kloza a reaz he zaoulagad, epad ma lavare: « Mont a ran da gana ar Matinezou d'ar baradoz. Aotrou Doue, me a laka va ene etre ha taouarn, » ha kerkent e tremenaz, hep poan nag anken, epad ma soume taoliou an Hanter Noz.

Ian ar Groaz a zo bet diskleriet sant gant ar Pab Beneat XIII.

SONJOMP ERVAD :

Lenn a reomp e leor Imitation Hor Zalver Jesus-Christ: « Dougit ho kroaz a galoun vad, hag hi ho tougo, hag ho » kaso d'al leac'h a glaskit, d'al leac'h ma vezo fin d'ar » boan. » Sant Ian en deuz douget he groaz gant karantez, Doue en deuz he amprout dre ar brasa poaniou spered, heb m'en defe klemmet. Bevet en deuz laouen, rak sikour Doue en doa. Gouzanvit evel dan an tamou poan a blijjo gant an Aotrou Doue rei d'oc'h, ha Doue ho sikouro ive, hag a rento skany ho kroaz.

AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Santez Katell, Guerc'hez ha Merzerez



Santez Katell, kristenez iaouank euz Alexandri, en Ejipt, a deuz abred da veza unan euz ar re vella euz tud he amzer var skianchou ar bed, met he feiz hag he zantelez a oa c'hoaz brasoc'h eget he gouiziegez.

D'ar mare ma rea an impalaer Maximin brezel d'ar gristenien, ar vere'hez iaouank, skuiz o velet krizder ha displealdet an impalaer en ho c'henver, a iéaz he-unan d'he gaout evit ho difen, ha diskouez eo red kredi e Jesus-Christ evit beza salvet.

Maximin a oue mantret ouz he c'hlevet, hag a reaz d'ezhi choum en he balez; boda a reaz heb dale, en dro d'ezan, ar gouzieka doktored euz ar vro, evit kelen

Katell hag he zrec'hi. E leac'h beza touellet gant komzou an doktored paian, Katell a oue treac'h d'ezho, hag eur c'halz anezho a lavaraz d'an impalaer: « Ni a ador Doue Katell. »

Goulskoude an impalaer Maximin a joumaz aheurtet, hag a reaz devi ez-veo an doktored o doa anzavet ho feiz e Jesus-Christ; ar zantez a oue taolet er prizoun. Ar vourrevien he skourjezaz antronoz gant foutou ploum hag a vrevaz he izili, epad diou heur, en eun doare skrijuz; da c'houde, e oue taolet er prizoun da vervel.

Greg Maximin o veza deut d'ar prizoun gant kabiten ar zoudarded, a oue souezet braz o velet ar zantez, choumet eno meur a zevez heb tam na banne, pareet neat, ha kaer evel an deiz. Prezeg a reaz d'ezo guirionez relijion Jesus, touch a reaz ho c'halonou, ober a reaz anezo kristenien ker stard, ma skuilljont, nebeut amzer goudeze, ho goad evit ar feiz.

A benn unnek devez, ar zantez, choumet hed an amzer-ze heb kaout tam da zibri, a oue tennet euz ar prizoun ha digaset dirak an impalaer, souezet-marzo o velet anezi beo, kaer ha iac'h.

Kinnig a reaz d'ezhi he c'hemeret da bried gant ma nac'hje ar feiz kristen, met ar zantez a respountaz: « Va Doue ha va guerc'hdet a zo va brasa tenzorieu, » na gollin nag an eil nag egile. » An impalaer, disprijet, a iéaz e kounnar, hag a reaz ober eur rod gant klezeier ha begou dir lemm enni, met ar rod, e leac'h freuza ha dispenn korf pur ar vere'hez iaouank, a strinkaz e mil dam.

Kalz paianed, o velet ar burzud nevez-se, a c'houlennaz ar vadiziant; an impalaer, kounnaret muioc'h-mui, a varnaz ar zantez da veza dibennet.

En eur vont d'ar verzerenti, Katell a reaz ar bedenman da Zoue: « Va Doue, grit, en ho madelez, na ve » na touchet na gulet, goude va maro, va c'horf pur » gant ar vourrevien, ha plijet ganeoc'h renta ar peoc'h » d'an Iliz. » Dibennet e oue, d'he zrivac'h vloaz, er bloavez 307; an elez a gasaz, dioc'htu goude he maro,

he c'horf var ar menez Sinai: eno eo bet kavet divezatoc'h. Ar peoc'h a oue roet d'ar gristenien, nebeut amzer goude merzerenti ar zantez.

SONJOMP ERVAD :

Kennerzet gant gras Doue, Katell, eur plac'h a drivac'h vloaz a oue treac'h da skiant oll doktored he bro, d'ar bed ha d'an drouk-spered. Goulennomp gant fizians, digant Doue, nerz da drec'hi enebourien hor feiz hag hor zilvidigez.

An impalaer Maximin a glaskaz dougen ar plac'h santel Katell da nac'h he feiz; aliez ive e kavimp var hon hent tud hag a glasko hon dougen d'ar pec'hed, guech dre bro-mesaou kaer, guech all dre c'hourdrouzou. Selaouomp mouez hor c'houstians pa verk d'eomp ar mad hag an drouk. Diskouezomp d'ar re a deufe da ober en hor c'henver labour an drouk-spered, n'emaint ket var an hent mad, ha labouromp, hervez hor galloud, d'ho zenna diouz ho dallentez.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Sant Sylvestr, Foundatour eun Urz Menec'h

(1177-1267)

Ganet er bloaz 1177, en Itali, Sylvestr a oa pinvidik he dud. Kaset e oue abred d'ar skol, hag o veza ma teske mad ha buan, he dud a oa er zonz ober anezan eun den a lezen brudet.

Deski a reaz al lezennou, guir eo; met deski a reaz guelloc'h c'hoaz skianchou Doue, hag ez eaz etouez an dud a Iliz. Ober a reaz vad d'an oll dre he vuez fur, he bedennou, he binijennou, he brezegennou; resevet e oue, iaouank c'hoaz, etouez chaloned iliz Osimo.

Guelet a reaz, eun devez, korf distrounket ha spoun-tus eun den maro brudet dre he c'hened, en he amzer,

hag e lavaraz kerkent: « Me a zo breman ar pezh m'eo » bet heman; me a vezo ar pezh ma 'z eo. » Skoet gant gras Doue, ec'h en em dennaz pell dioc'h an dud, en eul leac'h distro, evit beva he-unan: bez' e oa neuze daougent vloaz.

Betek neuze, Sylvestr en doa bet karantez evit an Aotrou Doue: divar an devez-se, he vuez a oue kalz santeloc'h. Iun a rea heb ehan, choum a rea pell hag hir en noz da bedi, na zebre nemet eun nebeut louzeier kriz.

He zantelez hen diskuillaz buan, met pa velaz e teue kalz tud d'he gaout, e tec'haz en eul leac'h all: ober a reaz kement-se meur a dro. Diveza ermitach a gavaz a oue Monte-Fano, met pa velaz e teue tud d'he velet eno ive, ha da c'houlen digantan eur reolen a vuez, e savaz evito eur gouent, hag e roaz d'ezo reolen sant Beneat. An abad santel en doa diskonezet d'ezan ar guiskamant a dlle rei d'he ziskibien, ha setu aze penaoz e savaz ar zant eun Urz nevez, dishenvel eun nebeut euz hini sant Beneat.

An diaoul, kounnaret-oll o velet ar vad a rea ar zant hag he venec'h, a glaskaz ober aoun d'ezo: epad an noz e rea d'an dorjou straka egiz ma vije bet an ti varnez koeza var an dud. Pedennou ar zant a reaz d'an drouk-sperejou tec'het, ha divar neuze an dud o devoue ar brasa fizians ennan.

Ar zant en devoue digant Doue sklerijen evit anaout, meur a vech, an amzer da zont; ouspenn-ze, ober a reaz miraklou braz, met choum a reaz humbl evelato. Eun devez, an diaoul a reaz d'an abad santel koeza divar deleziou an orator, ha choum eur pennad hanter-varo, met ar Vere'hez a rentaz ar pare d'he zervicher devot.

Urz ar zant, hanvet Urz ar Zylvestrined, a oue aotreet gant ar Pab Immosant IV er bloaz 1247. Ar venec'h a dlle sevel en noz evit lavaret eur pennad euz ho offis, ar Matinezou; ouspenn an offis a lavar an oll veleien, e tleont lavaret c'hoaz offis bian ar Vere'hez.

Peb hini euz ar venec'h a dle en em skourjeza en he gamprik eur vech er zizon, hag eur vech all gant ar re all; hed an Asvent hag ar c'horaiz, pep hini a dle en em

skourjeza diou vech bep sizun en he gampr, ha diou vech gant ar re all; ne zebront tam kig ebet, nemet klanv e vefent.

Azalek ar zul Fask betek gouel ar Groaz Savet (14 guengolo), hag azalek Nedelek betek mere'her al Ludu, e tebront daou bred bemdez; en oll devezioù all euz ar bloaz, nemet gouel braz a vefe, e tleont iun, dibri eur pred hebken, ha c'hoaz choum heb kemeret viou na leaz er pred-se.

Sant Sylvestr a varvaz d'ar 26 a viz du euz ar bloaz 1267; ren a rea neuze he zek vloaz ha pevar-ugent; Doue a ziskleriaz he zantelez dre eun niver braz a vira klou.

SONJOMP ERVAD :

Nag a binijen a ra ar venec'h er c'houdenhou! Sevel e kreiz ho c'houk, bemnoz, evit mont da veuli Doue; iun aliez, dibri boued gros ha dister, en em skourjeza avechou, setu ho buez pinijennuz. Eur c'halz anezo a zo bet fur hed ar vech goulskoude, met c'hoant o deuz plijout da Zoue, ha rapari evit ar re all. Ha ni, on deuz pec'het ken aliez, a zo mad da glem kerken ha m'on deuz an disterra diezamant, an disterra poan. Daoust ha n'eo ket d'ar baradoz eo on deuz c'hoant mont? Mar on deuz c'hoant mont di, kemeromp an hent assur: gouzanvomp hor poaniou gant pasianted.

AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Sant Didas, euz a Urz Sant Fransez

Ar zant-man a oa ganet e rouantelez Spagn. He gerent paour a vadou an douar, a labouraz da lezel gant ho mab eun heritach euz ar re dalvoudusa: karantez Doue hag he zoujans. Kenteliet ker mad, Didas a oa c'hoaz iaouank pa zilezaz he dud, evit mont da joun da di eur beleg santel; her pedi a reaz da zeski d'ezan guelloc'h c'hoaz an doare da zervicha Doue.

Er skol vad-se, Didas a oue buan santel braz: kastiza a rea he gorf dre ar iun hag ar binijen; tremen a rea eul loden vraz euz an deiz hag euz an noz o pedi. E kreiz he labour, he zonzj a veze atao e Doue; klevet komz a draou ar bed a oa dizaour evit he galoun ker soursiuz euz traou an env.

Kement a fae a rea var madou an douar, ma lezaz, heb he dastum, eur yalc'had arc'hant a velaz var he hent.

Nebeut bloavezioù goude, ar c'hoant en doa da bellât muioc'h diouz ar bed, a reaz d'ezan goulun beza resevet en eur gouent a Urz sant Fransez. Digemeret e oue gant joa, hag e teuaz da veza heb dale skouer an oll relijiuzed dre he humilite hag he aked d'ar binijen.

E goure'hemennou he zuperioed e vele atao bolontez Doue, hag eur blijadur e oa evitan senti, evel eur guir relijius, n'euz forz pegen diez tra a veze goulennet digantan.

Bez' en doa eun devoision dener evit ar Vere'hez: lavaret a rea bemdez meur a japeled, ha bep sadorn e iune divar bara ha dour, en he honor.

Choum a rea pell var he zaoulin, ar grusifi en he zourn, o sonjal er poaniou kriz en deuz gouzanvet Hor Zalver evit hor prena. Epad an amzer-ze, he galoun a veze ker beuzet er garantez evit Jesus, ma veze aliez dibradet he gorf divar an douar, heb m'hen defe gouezet.

Doue, evit diskonez guelloc'h pegement e plije d'ezan he zervicher, a roaz d'ezan an donezoun a viraklou. Eun devez, eur c'hrouadur o veza eat da gousket en eur fourn, he vam, heb sonjal, a c'houezaz an tan varnan; pa glevaz klemmou truezuz he mab, ez eaz evel eun diskiantez da glask sikour. Var he hent e kav Didas, a red raktal varzu ar fourn c'horet, o pedi Doue da ziouall ar bugel: hen tenna a ra euz a greiz an tan heb drouk ebet.

Daoust n'oa ket bet ar zant var ar studi, he zuperioed, oc'h anaout he furnez, a gasaz anezan da enezi Kanarie, evit beza e penn ar venec'h euz eur gouent a oa eno. Didas, en despet d'ar c'hoant en devoa da veza an disterra euz he Vreudeur, a zentaz raktal; er garg

huel-ze, n'oa nemet humploc'h a-ze, hag aketusoc'h da viret reolen an Urz. O veza kavet en enezi-ze kalz paianed, e labouraz a diz d'ho e'helen var guirioneziou ar relijion, hag e berr amzer en devoue ar joa d'ho gounit oll d'ar feiz kristen.

Ac'hano, ar zant a oue galvet da vont d'eur gouent euz he Urz, e Roum; eno eo e tremenaz en eur bokat d'he grusifi, er bloaz 1463.

SONJOMP ERVAD :

Ar zent oll n'int ket bet tud a zeskadurez vraz; met oll int bet humpl, oll o deuz, gant pasianted, gouzanvet poaniou an douar-man, ha brezellekeat heb ehan enep ho zechou fall. Nan, n'eo ket gwest an oll da brezeg an Aviel dre gomzou renket-kaer, an oll n'int ket galvet da vont d'ar broiou pell da c'hounit eneo da Zoue, met piou na c'hell ket beza humpl, distag diouz madou an douar; piou na c'hell ket kastiza he gorf, ha terri gant sikour Doue, he ioulou direol? — Setu gouiziegezh vella ar zent: en eur ober al labour-se eo int deut da veza santel, ha da c'hounit eur gurunen gaer er baradoz.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Sant Maxim, Eskop

Ar zant-man en deuz bet an heur vad da gaout eur geleannadurez kristen en he iaouankiz, hag abalamour da-ze, dre ma kreske he oad, e kreske ive he vertuz hag he furnez. D'ar mare ma teu an ioulou fall da zivoan er galoun, ha ma 'z eo ken diez dere'hel penn d'ezo, Maxim en doa desket an doare da enebi outo, ha diskouez a reaz kement a nerz kaloun epad he iaouankiz evit en em ziuall diouz an drouk, ma tale'haz bepred

he ene neat diouz ar pec'hed. Met evit dont a benn euz a gement-se, eo bet aketuz da veilla heb ehan var he oll skianchou, ha dreist oll var he zaoulagad. Poania a reaz gant al labour hag ar studi, met poania a reaz muioc'h c'hoaz gant silvidigezh he ene, hag abalamour da-ze e tremene meur a bennad amzer bemdez o pedi hag o sonjal e Doue. Beva a reaz etouez tud ar bed, met ne gemere ket he blijadur ganto; ober a reaz fae var madou hag henoriou an douar, evit klask hebken madou an env.

Goude beza bevet evelse er bed epad meur a vloaz, ez eaz da c'houlenn beza digemeret e kouent Lerins, er Provans; eno e c'hellaz en em rei d'ar beden ha d'ar binijen evel m'en doa c'hoant. O velet ar vuez santel a rene, he Vreundeur, ar venec'h, ne zalejont ket d'he gemeret evit ho skouer hag ho mestr var hent ar zantelezh.

Sant Honorat, abad ar gouent, o veza bet hanvet da eskop e kear Arles, Maxim a oue dibabet dioc'h tu evit gouarn ar venec'h var he lerc'h; lakât a reaz ar reolen da veza heuillet gant an oll, hag hen ober a reaz gant kement a zouder, ma ne zanje den ebet klem, n'euz forz pegen striz e oa an Urz.

Pa deuz ar maro da eskop Riez, eur gearik vian savet demdost da gear Dign, an dud a Iliz hag ar bobl euz a gear a gasaz kannaded da gouent Lerins, evit goulenn Maxim da eskop; met ar zant, pa glevaz ar c'helou-ze, a dec'haz heb lavaret ger da zen, hag a ieaz da guzat en Itali, e leac'h ma kave d'ezan ne vije ket dispennet he roudou. Kavet e oue gouskoude, ha kaer en devoue enebi, e rankaz mont betek kear Riez. Eno, an oll a reaz d'ezan eun digemer euz ar re gaera. Maxim, tenerreat he galoun, a zonzaz ervad e oa galvet gant Doue da labourat var an daehen-ze, ha setu perak, ec'h en em roaz d'an oll, gant ar brasa ioul da zavetei an eneo a oa fiziet ennan.

Diskouez a reaz eur galoun a dad evit he bobl, ha c'hoant braz en doa da bourvei da ezomou an oll, met euz ar beorien gouskoude eo e kemere ar brasa soursi: lavaret e vije bet e falveze d'ezan ho dizamma oll.

Goude beza great evel-se kalz vad en he eskopti, ha roet skoueriou a zantelez ha kenteliou kaer d'an dud a a oa dindannan, e varvaz evel eur zant, var dro ar bloavezh 460.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, dre an deskadurez kristen en doa bet, en deuz trec'het he oll ioulou fall, ha dalc'het neat sae ven he vadiziant. Ne zantomp nemet re, dre hor buez hon-unan, pegen diez eo miret ar vertuz a burete, pegement e rankomp stourm ma ne fell ket d'eomp beza gounezet gant hon techou fall. Oll oump douget d'an drouk, met goulskoude, peb den en deuz he bleg fall, he dech braz, ha peb hini a dle poania da drec'hi ar pleg-se.

Mar deo ar vuaneged pe ar goler ho tech braz, choumit heb komz pa vezo drouk ennoc'h.

Mar doc'h douget d'an ourgouill, sonjit en ho pec'hejou, en ho sempladurez, hag e viot humbl.

Mar doc'h gounezet gant an avaristed, sonjit e rankoc'h eun deiz kuitat hoc'h oll vadou ha renta kount da Zoue euz ar vad o pije gellet ober, ha n'o peuz ket great.

Mar doc'h techet d'ar vesventi, sonjit er poaniou braz a c'houzanvo ar mesvier en ifern.

Mar doc'h douget d'al luxur, sonjit en niver braz a dud a vezo daonet abalamour d'ar pec'hed-se: pellañt dioc'h ebatou riskluz ar bed; bezit fidel d'al labour evit na joumo ket ho spered da zonzal er seurt traou-ze.

Eur vech ma ves trec'het an tech bras, ar re all a zo eas ho zerri.

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ DU

Sant Houardon, Eskop

Evel m'eo bet diskleriet e Buez sant Tenenan, d'an unan var 'n ugent a viz gouere, Houardon, diskibl ar zant, a heuillas he vestr euz Bro Zaoz da Vreiz Izel.

Hiniennou o deus bet c'hoant diskleria en deuz treuzet ar mor var eul laouer vean, ar burzud-se n'eo ket dreist galloud Doue, sklear eo, met an dud desketa var buez hor zent koz, a gav d'ezho eo deut ar zant en eur vag, evel he genvroiz, p'en deuz treuzet ar mor gantho.

Goude beza douaret er Beuzit, var ribl ar ster Elorn e kichen ar Palud Bras, Houardon a zikouraz ar gristenien a oa deut gantan euz Bro Zaoz da derri an douarou gouez ha da zie'hrizienna an drez ar spern hag ar brouskoat a oa en dro d'ar Beuzit. Ma oa mad da zikour he genvroiz da zifraosta an douar, ar zant a oa ker mad all d'ho c'helen var ho deveriou e kenver Doue, eur pennad brao euz he amzer a roe bemdez d'ar beden, araok pe c'houde he oferen, rak beleg e oa. Kavet en doa, er Beuzit, atrejou ar japel a oa bet savet guechall gant sant Konogan, he zevel a reaz a nevez evit sakramanti easoc'h an dud a oa deut gantho.

Pa oue savet kalz lohennou hed ar ster, ha renket mad an traou var dro ar Beuzit, ar zant a zavaz eun ermitach evitan e goueled ar gear hanvet breman Landerne: ar feunteun a oa e kichen an ermitach a ro e peb amzer dour kaer ha sklear, hag a vez great anezhi atao feunteun sant Houardon.

Pa 'z eaz sant Ternok hanvet ive sant Tenenan da eskop da Gastell, e reaz da Houardon dont buan d'he zikour. Ha pa varvaz ar mestr, e kichen Lann-Ternok hanvet breman Landerne, tud an eskopti a c'houlennaz beza renet gant Houardon: hen eo a oa gwest ar muia da beurachui, e bro Leon, labour an eskop santel.

An eskop nevez a oue skouer an oll: ma oa santel pa oa ermit, e oue santeloc'h c'hoaz pa oue eskop. Mont a reaz da vodadeg vras Menez-Bre gant sant Herve, evit teurel an ekummunugen var ar c'homt Konomor, muntrel he bried, santez Trifina, mes an daou zant a zigouezaz eun tamik varlerc'h ar re all, rak ar c'heaz dall na c'helle ket kerzet buan.

Unan euz an dud a oa eno a c'hrosmolaz: « Ma n'eo ket eur vez, emezhan, on defe ranket gortoz abalamour d'ar c'hos dall-ze! » Sant Herve a respountaz d'ezhan

seder: « Livirit bennoz da Zoue, m'o peuz bet ar sklerijen, e'houi a e'helle beza dall koulz ha me! » An den a gouezaz kerkent d'an douar, dall put. An dud, hag Houardon er penn araok, a bedaz ar zant da renta d'ezhan ar guele. Herve a reaz neuze sin ar groaz gant he vaz var an douar, ha kerkent e sinklaz eno eum eien gaer. Gant dour ar feunteun, Herve a bareaz an den; dour ar feunteun a red e'hoaz hirio.

Pa oant o tistrei d'ar gear, an eskop a e'houlennaz digant ar zant dall ober d'ezhan guele an env digor, evel m'eo bet diskleriet e Buez sant Herve, d'ar 17 a viz even. Var bouez pedi epad tri dervez, sant Houardon en devoue he e'houlenn. Guele an env digor kaer, hag ennhan an nao geur elez, ar batriarched, ar verzerien, an oll zent. Eun eal ho hanve hini hag hini da zant Herve, dre ma teuent a vel d'an daou zant. Ma oa an elez hag ar zent kaer da velet, e oant ker kaer all da glevet (rak kara a reant en eun doare dudius. Achi a rejont ho e'hantikou dre ar e'han: Cantemus Domino ha da e'houde, ar baradoz a oue serret dirak ho daoulagad.

Divar an dervez-se, an eskop santel na gavas mui an distera saour gant plijadureziou an douar: klanv e oa gant ar e'hoant guele ar baradoz evit mad.

Pa deuas eun eal da ziskleria da zant Herve deiz he varo, e reaz pedi he vignou sant Houardon da rei d'ezhan he zakramanchou diveza, ha neuze e oue klevet kan dudius an elez, pa nijas ene ar zant dall d'ar baradoz.

Pa gouezaz klanv, Houardon a bedaz Sant Goueznou da rei d'ezhan he zakramanchou, ha da e'houde, e reaz d'he veleien prometti e vije hanvet ar manac'h santel eskop var he lere'h. Dizale, Houardon a dremenaz laouen: mall en doa da gaout baradoz, hag ac'hano e velaz sant Goueznou o ren an eskopti var he lere'h.

SONJOMP ERVAD :

Hor zent koz a zo bet great sent anezho gant an dud, mes tri hebken a zo bet diskleriet sent gant an Iliz: sant Eozen, alvokad ar beorien; sant Guillou Pichon, eskop Sant-Briek;

ha sant Ian ar Grill, eskop Sant-Malo, diskleriet sant gant ar Pab Leon X.

Ar zent all euz hor bro Breiz a zo bet diskleriet sent gant an dud o deuz ho anavezet, p'o deuz resevet grasou kaer dre ho dourn. Kenderc'hel a reont d'ober vad da dud ar vro, setu neuze eo eun dever evidomp kenderc'hel d'ho fed. Bez' ez int hor zent d'eomp-ni, abalamour m'o deuz bevet ama, etouez hon tud koz; hor zent d'eomp-ni abalamour na vezont ket pedet gant tud ar broiou all; hor zent d'eomp-ni abalamour na baouezont da zougen karantez d'eomp. Red mad eo d'eomp eta ho fed gant fizians, pa 'z eo guir na glaskont nemet eun dra: boda ar muia ma e'hellint a Vreiziz en dro d'ezho er baradoz.

AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ DU

Sant Andre, Abostol

Sant Andre, breur da zant Per, a oa ginidik euz ar Betsaid, ha pesketaer dre he vicher. Mont a rea aliez da zelaou sant Ian Vadezour o prezeg, hag eun deiz e klevaz anezan o lavaret, p'edo Jesus o tremen: « Setu » aze Oan Doue. » Andre a ententaz mad ar e'homzouze, ha var an taol e santaz he galoun gouezet gant gras Doue. Mont a reaz var eun da gaout hor Zalver Jesus, ha bet en devoue an heur vad da gomz gantan eur penadik; epad an amzer-ze he galoun a oa karget a joa hag a levenez, ha biskoaz den na e'hello entent an dousder a gavaz en he goumpagnouez.

Divar neuze, e teuz da veza unan euz an diskibien aketusa da heuil hor Zalver; n'her e'huiteaz mui nemet evit mont d'ober he besketerez, ha test e oue euz eur e'halz euz he vurzudou.

Goude m'oa pignet Jesus-Christ en env, ha ma oue diskemet ar Spered-Santel var an ebstel da zeiz ar

Pantekost, sant Andre a iez da brezeg an Aviel en Thras, er Sithii hag en Akai; skigna a reaz ar relijion gristen dre ar broiou-ze.

Eun deiz, pa oa o prezeg e kear Patras, gouarner paian ar gear-ze, hanvet Ejee, a fellaz d'ezan hen lakât da ginig ezanz d'an doucou faoz, hag evelse da adori anezo. An Abostol santel, ken dispount ha tra, a lavaraz da Ejee. « Me ne adoran nemet eun Doue oll- » e'halloudek; bemdez e kinnigan d'ezan, n'eo ket kig » ha goad anevaled eo, met an Oan santel ha dinan a » zo bet lakeat d'ar maro var ar Groaz. Ar gristenien » a gemer he gorf hag he c'hoad sakr evit maga ho ene, » ha goude servichout da vagadurez d'ezo, hen a joun » atao en he bez ha beo evelato. »

Ejee o velet ervad ne deuje ket abem da c'hounit an Abostol, her barnaz da vervel var ar groaz.

Kerkent ha ma velaz ar groaz ma tlie mervel varni, sant Andre leun a joa, a lavaraz: « O kroaz sakr, o » kroaz santel, mont a ran etrezek ennoe'h gant leve- » nez ha fizianz, va digemerit evel m'oe'h euz digeme- » ret va mestr Jesus. Kroaz benniget hag am euz » e'hoanteat epad pell amzer, va unanig gant va Zalver, » rak Hen ive a zo maro var ar groaz evit va frena. »

Prest goude, ar gouarner a roaz urz d'her staga ouz ar groaz, hag epad daou zevez e choumaz er stad poaniuz-se. Etreant, ar zant na golle ket kalon, alia a rea ar gristenien da joun stard en ho feiz, lavaret a rea d'ezo disprijout poaniou ar bed-man evit gounit ar baradoz. Mervel a reaz var eur groaz, met ar groaz-se e doa, var a greder, furn eun X.

He gorf santel a oue kaset da Almasi, e rouantelez Napl, hag he groaz a zo e Marseill, en Abati Sant-Victor. Penn an Abostol santel a zo henoret en iliz sant Per, e Roum.

SONJOMP ERVAD :

Ar groaz, da lavaret eo, ar poaniou a zo dous ha skanv da zougen d'an neb a gar Jesus-Christ; ha ne dleer ket beza souezet, m'o deuz ar zent goulennet ar groaz gant kement a vall.

An dud ne glaskont nemet ho flijadur var an douar, ne c'hellont ket entent e ve kavet dous ar poaniou, abalamour n'o deuz biskoaz tanveat an dousder hag ar gonsolasion a skuill Jesus var eneo an dud her c'har, hag a zoug ho c'hroaz heb klem, betek ar maro.

Digemerit eta, a galoun vad, ho kroaz digant Doue; dougit anezi gant pasianted ha nerz kaloun, ha c'houi a gavo ive konsolasion en ho poaniou.

AR C'HENTA DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Tugdual, Eskop

Sant Tugdual, euz lignez rouaned Breiz-Izel a zisprijaz henoriou ha madou ar bed en he iaouankiz: e leac'h mont d'ar c'hoariou ha d'an ebatou, ec'h en em denne en iliz hag eno e choume pell hag hir da bedi. Gant an dra-ze, an den iaouank a oa aketuz da dostât aliez ouz ar zakramanchou, troet e o ive d'ober vad d'ar paour: kalz tud a veze guisket ha bevet divar he goust, ha pa veze great gaou outo, e veze prest atao da zifen ho guir.

Evit gellout dilezel a grenn oll blijadureziou an douar, ec'h en em dennaz en eur gouent. An drouk-spered a zispennaz he roudou, hag a reaz brezel d'ezan, eno ive; epad meur a vloaz, ne ehane da zigas bep seurt tentasionou fall var he spered, klask a rea atao an tu d'ober d'ezan koueza er pec'hed. Tugdual, evit derc'hel penn d'he enebour, ha trec'hi an ioulou fall a zante en he galon, a gastize bemdez he gorf dre ar ium hag ar binijen; bemdez ive e tremene kalz amzer o pedi hag o e'houlen sikour digant Doue. Gouzout a rea ervad na e'hellomp beza treac'h d'an drouk-spered, nemet sikouret e vefemp gant gras Doue. Selaouet e oue he

bedennou, ha biskoaz ar pec'hed ne gaillaraz he ene, ha ne reaz d'ezan koll mignouniach an Aotrou Doue.

He vuez santel hag he skoueriou mad a reaz d'ezan beza dibabet evit gouarn he gouent, ha lakât a reaz he oll furnez evit ober al labourou euz he garg; dre he aliou mad e lakea ar re a oa dindan he c'halloud da vale var hent ar zantelez, ha da gaout eur garantez vrasoc'h e kenver Doue.

Goude beza great kalz vad en he gouent, e tîbabaz eun all evit gouarn en he leac'h, hag e kemeraz daouzek manac'h a galoun vad, evit mont ama hag ahont da labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneo. Mont a rejont euz an eil penn d'egile dre vro Dreger, en eur brezeg an Aviel hag en eur c'houmit e peb leac'h eun niver braz a eneo da Zoue. Sant Tugdual, dre he brezegennou nerzuz, a lakeaz meur a hini da zistrei var an hent mad: met ar burzudou a rea dre ma kerze, a c'hounezaz muioc'h a eneo c'hoaz da relijion Jesus-Christ: Doue a roa d'ezan he oll c'houlennou. En eul leac'h e roe ar gulet d'eun den dall pe ar c'hlevet d'eun den bouzar; en eul leac'h all e lakea eun den seizet da vale: diez e ve niveri an dud klanv a bareaz. En doareze ne oue ket pell evit boda, en dro d'ezan, eun niver braz a gristenien nevez; neuze, evit kaout tud santel guest da gendelc'her he labour var he lerc'h, e reaz sevel eur gouent vraz e Treger.

Pa deuz ar maro da eskop ar vro-ze, ne oue nemet eur vouez evit goulenn Tugdual en he leac'h; met hen, gant aoun rak eur garg ken diez ha ker pounner, a fellaz d'ezan mont da guzat, da c'hedal ma vije bet hanvet an eskop nevez. Ar roue Derok a gavaz ar zant, hag a reaz d'ezan plega da volonteaz an Aotrou Doue; great e oue eskop nebeut amzer goude-ze.

Er garg nevez-se, e kendalc'haz d'ober pinijen ha da bedi muioc'h c'hoaz eget diagent, evit tenna grasou var an eneo; he di a veze digor bepred d'ar paour koulz ha d'ar pinvidik, hag an oll a veze digemeret evel pa vijent bet he vreudeur: en doareze e c'hounezaz meur a hini da Zoue.

Pa zantaz ar gozni o tont, hag he nerz o vont digantan, e c'hanvaz sant Ruellin evit gouarn an eskopti var he lerc'h; goudeze na zaleaz ket da renta he ene d'he Grouer ha da vont da reseo he gurunen en env, var dro ar bloavez 598.

Sant Tugdual a zo hanvet ive Pabu, eur ger hag a ziniñe Tad guechall goz: e Leon ez euz diou barrez hag a zoug he hano: Trebabu ha Sant-Pabu.

SONJOMP ERVAD :

Sant Tugdual, evel kalz sent all, en deuz great pinijennou rust, petra benag m'oa neat he galoun diouz ar pec'hed; kuiteat en deuz he zanvez, tec'het en deuz diouz an henoriou hag an ebatou, evit plijout da Zoue. Ha ni, on deuz great ken aliez ar pec'hed, ne garomp ha ne glaskomp nemet madou ha plijadureziou ar bed, en em blijout a reomp el leac'h ma 'z euz riskl evit hon ene, ha ne fell ket d'eomp klevet hano euz ar binijen.

Daoust ha bez on deuz-ni e guirionez ar memez Aviel gant ar zent? ar memez lezen ganto? Ha kaout a ra d'eomp int bet faziet, hag o deuz great re a binijen? nan, anzavomp kentoc'h eo ni a fazi; ne reomp ket a binijen aoualc'h.

AN EIL DEVEZ A VIZ KERZU

Santez Bibiana, Guerc'hez ha Merzerez

Ar zantez-man, ganet e Roum, a oa kristen ha santel he zud. He zad, he mam hag eur c'hoar d'ezi a zo henoret gant an Iliz evel sent ha merzerien. He zad, hanvet Flavian, a oa gouarner e kear Roum; met evel ma oa kristen, eun impalaer fall, Julian, en doa nac'het he feiz, a lamaz he garg digantan, hag a reaz he gas er meaz euz ar vro, goude beza laeret he zanvez.

Flavian a gouezaz neuze en eur baourentez vraz, ha prestik goude e roaz he vuez evit an Aotrou Doue.

He mamm, santez Dafroza, a oue dibennet abalamour na felle ket d'ezi adori an doucou faoz, ha nac'h ar guir Doue.

An impalaer a roaz karg Flavian d'eun den kriz ha dizoue hanvet Apronian, hag a oa he blijadur ober brezel d'ar gristenien: kenta a roaz ar gouarner nevez, a oue gervel dirazan santez Bibiana hag he c'hoar Demetri. Lavaret a reaz d'ezo: « Adorit doucou ar rouante- » lez; ma na zentit ket, o pezo da c'houzanv eur maro » krisoc'h c'hoaz eget maro ha kerent. » Met an diou c'hoar, ker seder ha tra, a respountaz: « Ni ne adorimp » biken nemet ar guir Doue, krouer an env hag an » douar; fizianz on deuz da veza sikouret gantan ha » da gaout nerz aoualc'h da c'houzanv dre garantez » evitan, ar poaniou krisa, hag ar maro mar deo red. » Eüruz e vemp, ni ive, da skuill hor goad evit difen hor » feiz. ha da c'hounit evel-se ar memez kurmen gant » hon tad hag hor mam garet. »

Doue, dre druez ouz Demetri marteze, abalamour ma oa faouank braz, a reaz d'ezi mervel eno en eun taol, dirak ar gouarner hag eharz treid he c'hoar; lakeat eo bet e renk ar verzerien gant an Iliz.

Santez Bibiana a jonne evels-se he-uman kaer, hag an impalaer a reaz peb tra evit he distrei divar an hent mad. Pa velaz ne c'helle ket dont a benn anezi, e lakeaz eur plac'h fall da glask he gounit; met, nag he c'houzou flour, nag he fromesaou kaer, nag he oll finesaou ne c'hlejont lakât Bibiana da jench. Fallgalounet ive d'he zro, ar plac'h-se a ieaz da gaout ar gouarner, da lavaret d'ezan ne gave pleg ebet var Bibiana, hag e kolle he foan hag he amzer o klask deseou anezi.

Neuze ar gouarner, eur gounnar direiz ennan abalamour m'oa bet trec'het gant eur vere'h, a roaz urz da skourjeza ar zantez en eun doare skrijuz. Ar verzerez a c'houzanvaz ar boan-ze gant pasianted; epad ma talc'he he daoulagad savet etrekez an eny, ha goude eur

verzerenti hir, he ene a nijaz d'ar baradoz evit beza unanet gant ar zent, gant he zud dreist-oll.

He maro a zigouezaz var dro ar bloaz 363.

SONJOMP ERVAD :

An tentasionou a deu d'eomp a berz an dud a zo aliez goasoc'h eget ar re a deu digant an drouk-spered he-unan. Santez Bibiana a zo bet klasket e peb doare ober d'ezhi mont eneb lezen Doue, ha netra na c'hellaz he lakât da goueza er pec'hed, abalamour ma pede Doue bepred, ha ma lakea he oll fizians ennan.

Ni ive a vez tentet e meur a zoare, gant ar bed, gant ar c'hig hag an drouk-spered; ha Doue a gav mad kement-se, evit hon lakât da anaout hor zempladurez. Doue ne losk ket ac'hanomp da veza tentet dreist hon nerz, hag abalamour da-ze e tleomp enebi bepred heb fallgalouni, rak ententomp mad eun dra, m'en deuz an drouk-spered c'hoant d'hor c'holl, Doue en deuz c'hoaz eur c'hoant brasoc'h d'hor savetei.

Pa vezo an drouk-spered var hon tro, o klask hon lakât d'ober an drouk, lavaromp ennomp hon-unan: « Petra 'z » an-me da ober? ha trei a rin-me kein d'ar baradoz, va » bro; ha koll a rin-me ar mirit euz va oberou mad hag euz » va foaniou, evit eur blijadur fall? Hag ankounac'hât a » rin-me madelez Doue em c'henver, evit kemeret eur bli- » jadur hag a dremeno ker buan, ha ne losko var he lerc'h » nemet enkreuz, displijadur ha rebechou c'houero? » Hag evel m'eo merket er Skritur-Zakr, sonjit ive en ho finvezioù diveza, ha ne bec'hot biken.



AN TREDE DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Fransez Xavier, Patroun Breuriez ar Feiz

(1506-1552)

Fransez, ganet e bro Navarr, er Spagn, a ieaz da Baris da achui he studi; en amzer-ze, skoliou braz Paris a oa brudet-dreist.

E Paris, an den iaouank a deuz da veza ker gouziek ma oue lakeat da ober skol d'ar re all; daoust m'oa kristen, e teuz da c'hoeza gant an ourgouill, ha ne oa nemet avel en he benn. D'ar mare-ze, e teuz da Baris eun den all euz ar Spagn, hanvet Ignas a Loyola, hag en doa c'hoant da gaout tud da labourat gantan evit savetei an eneo.

Ignas ha Xavier a gomze aliez an eil gant egile; Xavier a lavare: « Sonj am euz da studia guelloc'h c'hoaz » ar guirioneziou am euz da zisplega dirak va skolaerien; c'hoant am euz da veza brudet muioc'h c'hoaz. — » Spered oc'h euz, a respounte Ignas, eur mestr oc'h da ziskleria ar skianchou huella, met petra ra-ze? — » Henoret e vin muioc'h c'hoaz gant an dud, eme Xavier. — Petra dal d'an den gounit ar bed oll, a lavare » neuze Ignas, mar teu da goll he ene? »

Xavier ne reaz van ebet en troiou kenta ma klevaz ar c'homzou-ze, met o veza ma teuz Ignas d'ho lavaret meur a vech epad eun nebeut miziou, ar mestr iaouank ho lakeaz doun en he spered. Lavaret a reaz eta eun devez: « Red eo d'in chench buez. » Ober a reaz kerkent eur retred vad, ha divar neuze e chenchaz. Studia a reaz a greiz kaloun ar Skritur Zakr, an theoloji, ha Buez ar Zent, evit beza guest da brezeg an Aviel d'an dud, hag o veza eat gant ar re genta en Urz an Tadou Jesus-

ted, savet gant sant Ignas a Loyola, e oue, var he c'houlenn, kaset d'an Indez.

Epad ar vech var vor, e prezege bemdez d'ar var-toloded, hag e tremene kalz amzer o kelen anezo; en noz e choume avechou pell da bedi ha da c'houlenn ar grasou m'en doa ezoum. En doare-ze e tenne bennoz Doue var he labourou, hag e reaz d'eur c'halz euz tud he lestr beva e guir gristenien.

Kerkent ha ma oue digouezet en Indez, ar zant en em roaz da brezeg an Aviel. Dre he gomzou nerzuz e tihune ar bec'herien kaledet, ha goudeze, ar zantelez euz he vuez hag ar burzudou a rea, a achue ho gounit oll da Zoue.

Doue ive, evit diskouez he vadelez en he genver, a roaz d'ezan ar c'hras da zeski var an heur iez ar broiou ma tremene dreizo, hag avechou zoken, en eur gomz eur iez nevez, e veze ententet gant meur a bobl hag o doa eur iez dishenvel an eil diouz egile, evel ma veze ententet an Ebestel er pem kenta euz an Iliz.

He garantez evit he nesa a oa ker braz ha ker birvidik, ma ne oufe den diskleria ar boan a gemeraz er broiou pell, na niveri an eneo en deuz kaset d'ar baradoz. Meur a gant mil paian en deuz gounezet d'ar feiz, ha badezet en deuz he-man an darn vuia anezo.

D'he c'houec'h vloaz ha daou-ugent, ar zant en doa c'hoant mont d'ar Chin da brezeg ar feiz, met gounezet en doa he gurunen. Koueza a reaz klanv en enez Samsian, hag eno, gourvezet en eul lochennik var eur guchen delliou seac'h, dilezet gant an oll, heb sikour den nemet eur martolod paour a oa en he gichen, e rentaz he ene kaer da Zoue epad m'edo he zaoulagad o para var ar grusif a zale'he etre he zaouarn, er bloaz 1552.

Ger ar zant-man, p'en deze c'hoant kaout sikour digant Doue en he vuez a oa: O Trindet santel! » avechou all ec'h en em erbede ouz ar Vere'hez: « **Monstra te esse** » Matrem: diskouezet ez oc'h eur vam vad. » M'en deuz gouzanvet kalz poaniou evit gounit eneo da Zoue, eo bet digollet, er vuez-man zoken, gant He Zalver ben-niget; avechou e veze ken devet he galoun gant tan

karantez Doue, ma veze klevet o lavaret: « Aoualc'h, » o va Doue, aoualc'h! bezit truez ouz va c'haloun. » Avechou all, e tibrade divar an douar dre nerz he garantez.

Sant Fransez Xavier a zo patroun Breuriez ar Feiz.

SONJOMP ERVAD :

I. — Sant Fransez a reaz eur retred evit sonjal en he zilvidigez, ha guelek penaoz e c'helfe en em zavetei; eno e klevaz mouez Doue.

Pegen talvouduz eo eta eur retred great mad! Eno, Doue a gomz ouz ar galoun; eno, pell diouz trouz ar bed, e klevet he vouez hag e skuill var an ene he c'hrasou kaera. Ped den o deuz saveteat ho ene divar eur retred great mad! Ma vez guelek avechou hiniennou ha ne vezont ket guelloc'h evit beza bet er retred, e tleer lavaret n'o deuz ket lakeat ho foan d'ober mad ar retred-se, na da zalc'her mad d'ar promesaou o doa great eno da Zoue.

II. — Sant Fransez Xavier a zo patroun Breuriez ar Feiz. Eun dra gaer eo evit ar gristenien skriva ho hano er Vreuriez-se; ar visionerien a ro ho foan, ho danvez, ho c'haloun, ho buez d'an dud divadez: ar guir gristenien a dle rei eun aluzen evit ho zikour, ha kaout perz en ho meritou. Kaera a oufet ober evelato, eo sevel eur beleg.

AR PEVARE DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Per Chryzolog, Doktor

Ar zant-man a oa ginidik euz kear Imola, en Itali, hag a oue leshanvet Chryzolog, abalamour ma c'houie prezeg en eun doare dispar. He aotrou 'n eskop o veza klevet hano euz he zantelez, her greaz avieler.

Pa varvaz arc'heskop Ravenn, tud kear a zibabaz unan euz ho beleien evit gouarn an eskopti var he

lerc'h, met red e oue d'ezo he gas da Roum evit guelek ha kavet e vije mad gant ar Pab. Ho c'hamadet a iezaz eta da Roum; pedi a rejont eskop Imola da vont ganto: mont a reaz gant he avieler, Per Chryzolog.

Epad an amzer-ze, sant Per ha sant Apolliner en em ziskonezaz d'an Tad santel ar Pab, evit diskleria e tlie lakât Per Chryzolog da arc'heskop e Ravenn. Ar Pab o veza anavezet en doare-ze bolontez an Aotrou Doue, a lavaraz d'ar gannadet, kerkent ha ma 'z ejont dirazan: « Per, avieler Imola, a vezo hoc'h arc'heskop; n'eo ket » an hini oc'h euz choazet eo a vezo. » Ar c'homzou-ze a oue digemeret fall er penn kenta, met neuze ar Pab, evit ho sklerijenna, a lavaraz d'ezo petra oa bet diskleriet d'ezan en deiz araok, hag evel-se ar gannadet a blegaz a galoun vad da volontez Doue, hag a oue leun a respet evit ho arc'heskop nevez, choazet d'ezo gant Doue he unan.

Pa 'z eaz ar pastor santel da Ravenn, ar bobl hag an impalaer he unan, a deuaz d'he ziambrouk evit diskouez d'ezan pegen eüruz e oant d'he zigemeret; neuze Per, goude beza ho zrugarekeat, a lavaraz d'ezo: « Va » c'harg a zo pouner, met c'houi her skanvaio d'in, » mar kirit heuil lezen Doue, ha selaou ar pezh a livirin d'oc'h euz he berz. »

Guelek a rea, n'oa ket desket-kaer he bobl var guirioneziou ar relijion, setu perak ec'h en em lakeaz da gelen anezo var ho deveriou a gristen, ha dreist-oll var an deveriou en deuz peb hini e kenver Doue hag e kenver he nesa, hervez he stad. Choum a ra ganeomp e'hoaz var dro nao ugent euz ar c'henteliou kaer a roaz d'he bobl.

E Ravenn edo ar c'hiz d'ober bep seurt dansou ha e'hoariou difennet d'an deiz kenta euz ar bloaz; ar zant a deuaz a benn da zise'hrienna ar c'hiz fall-ze dre he brezegennou nerzuz. « Ar re, emezan, o devezo kemeret » ho flijañur er bed-man, gant an drouk-spered, ne » c'hellint ket beza eüruz er bed all. »

Eun deiz e poanie kement da brezeg ha da rei ar virionez da entent, ma teuaz da goll he vouez a greiz

ma prezege. An dud a oa en iliz, a zirollaz neuze da lenva fors, o velet pegement a boan a gemere ar zant d'ho c'helen. An eskop santel a drugarekeaz an Aotrou Doue, evit ar vad en doa great o lemel he vouez digantan.

Goude beza gouarnet he eskopti epad 18 vloaz, ha desket hent ar baradoz d'an eneoù, e varvaz e karantez Doue, var dro ar bloaz 449 .

SONJOMP ERVAD :

Peb hini ac'hanomp a vezo barnet eun deiz var deveriou he stad. Siouaz! niveruz eo an dud ne zonzont ket e kement-se, ha goulskoude, pebez kount a vezo da renta da Zoue! C'houi, tadou ha mammou, a vezo goulennet diganeoc'h ha soursiuz e viot bet da gelen ho pugale, d'ober d'ezho lavaret ho fedennoù diouz ar mintin ha diouz an noz; ha fidel e vezoc'h bet d'ho c'has d'ar skol gristen, d'ho c'has d'an oferen ha da govez, ha da viret outo da vont etouez ar c'houm, pagnuneziou fall. An enklask a vezo great kalz pisoc'h eget na sonjit, netra na vezo ankounac'heat.

M'oc'h euz great ho tever penn da benn, pebez kurunenn gaer o pezo gounezet; met mar doc'h bet fall en eun doare benag, na pebez poan, na pebez rebechou c'houero a zo ouz ho kedal!

AR PEMPED DEVEZ A VIZ KERZU

SANTEZ BARBA, GUERC'HEZ HA MERZEREZ

Setu ama ar peb brasa euz an traou a verk d'eomp al levriou koz ha leor pedennoù ar veleien, ar Brevier, divarbenn santez Barba, a zo ken anavezet dre ar bed kristen, hag a vez pedet ken aliez gant an dud devot.

Barba, ganet e Nikomedii prest goude ar bloaz 200, e doa eun tad pinvidik-mor ha paian hanvet Dioskor.

Barba a oa pennherez, hag a oue brudet buan dre gear; bez' e doa danvez, spered ha gened.

Dioskor, evit diouall guelloc'h he vere'h, a zavaz eviti eun dourell huel ha pinvidik, lakât a reaz eno kement a c'hell ober plijadur d'eur plac'h iaouank, gervel a reaz ar mistri gouzieka da gentelia Barba, hag e lavare: « En doare-ze, va merc'h a garo ac'hanoun, hag ar re a » blijo d'in. »

D'ar mare-ze, e veve Orijen, unan euz ar c'haera speredjeou a zo bet var an douar; kristen e oa, hag hen, pe unan euz he ziskibien a c'hellaz sklerijenna merc'h Dioskor. Ar plac'h iaouank, gant he spered digor, a ententaz buan peger vean eo adori an idolou: goulenn ha reseo a reaz ar vadiziant.

Ar re binvidika euz paotred iaouank ar vro ne c'hellent ket mont betek Barba, met sonjal a reant emmi, hag hiniennou anezo a doullaz kaoz da Zioskor divar benn he vere'h. An tad a gomzaz d'ar zantez, lavaret a reaz d'ezi peger kaer e oa ar fortunioù a ginniget d'ezan eviti. Hi a respountaz: « Va zad, me zo etruz ganeoc'h, » ha n'em euz ket lakeat va zonzj e paotr iaouank ebet. » An tad na c'houlennaz ket hirroc'h.

Mont a reaz da bell bro, evit rei amzer d'he vere'h d'en em zonzjal, met hi, e leac'h trei gant ar bed, a vru-zunaz oll idolou he zad. Da c'houde, e reaz ober eun trede prenestr var he c'hampr, evit merka e krede e tri Ferson an Drinded.

Pa zistroaz Dioskor d'ar gear, ez eaz e kounnar o velet labour he vere'h, hag e klaskaz he laza, met Barba a dec'haz. Paket e oue, evelato, eun nebeut goude, ha taolet er prizoun: gouarnet kear, Marsian, a reaz d'ezi, antronoz, dont chadennet dirazan.

Ar gouarnet a glaskaz deseo ar zantez dre bromesaou kaer, met hi ne reaz van ebet; neuze e reaz skourjeza he c'horf tener en eun doare didruez, trouc'ha d'ezhi eur c'hostez euz he stomok, ha teurel c'hoalen gros var he gouliou beo. Eur baianez, Juliana, gounezet d'ar feiz kristen o velet nerz-kaloun Barba, a ziskleriaz neuze a vouez huel: « Relijion Barba a zo ive va reli-

jion. » Chadennet e oue kerkent, ha kaset gant ar zantez d'ar prizoun; met e koulz an noz, Barba a oue pareet dre vuzud, he c'horf a oa ker iae'h ha biskoaz, pa c'houlaouaz an deiz.

Abred kaer, Marsian a reaz dispenn, grasoc'h c'hoaz, korf ar verzerez; devet e oue tu ha tu, met Barba na rea nemet mouse'hoarzin. Ar barnet a lavaraz neuze: « Ra vezo divisket ha kaset dre gear oll, gant bour- » revien karget d'he skourjeza heb ehan; da c'houde, » e vezo dibennet, hi ha Juliana, a zo troet ganti. » Pa glevaz ar zetans, Barba a gennerzaz Juliana, hag a reaz ar beden-man: « Salver Jesus, diouallit va c'horf pur diouz sellou divodest an dud digristen. » Ar verzerez a oue tennet he dillad diganthi, met Doue he guiskaz gant eur sklerijen gaer hag a zalle ar baianed.

Dioskor, an tad kris, a zibennaz he unan he vere'h, d'ar 4 a viz kerzu euz ar bloaz 235.

Epad ma tiskenne an tad didruez divar ar menez, he voue'hal leun-c'hoad en he zourn, eul luc'heden her puluc'haz.

Eleiz a dud devot da zantez Barba a zo bet diouallet ganti euz an tan, euz ar gurun hag euz ar maro trum; ar zent o deuz roet meur a skouer kaer euz he galloud braz en env.

SONJOMP ERVAD :

Eun dra vad eb goulen bemdez digant Doue, dre zikour santez Barba, ar c'hras da reseo, abars mervel, sakramanchou an Iliz; eun dra vad eo ive, pa 'z eer d'an oferen, goulen trugarez an Aotrou Doue evit ar re oll a dle mervel en devez-se; eun dra vad eo c'hoaz, araok mont da gouskat, lavaret eur Bater hag eun Ave Maria evit kement hini a ielo dirak Doue, e koulz an noz, evit beza barnet. Met mar deo mad ober eur bedennik bemdez da zantez Barba; eo guelloc'h c'hoaz ren eur vuez direbech, evit kaout guir da reseo sikour ar zantez vraz-se, var an tremenvan.



AR C'HOUEC'HVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Nikolas, Eskop

Ar zant-man, ginidik euz al Lisii, a oa ken devot ha ker santel ez-vianik, ma choume souezet peb unan oc'h he velet o pedi. He gerent a oa tud a feiz krenv, hag a lakeaz abred ho bugel en eur skol vad. Evel m'en doa eur spered lem ha digor, e teuz da veza gouizieg e berr amzer var an oll skianchou; met e kenver studia, e tale'haz mad ive d'ar beden, hag he vestr, o velet an aked en doa da labourat ha da bedi, a lavare d'ar skole-rien all kemeret skouer dioutan.

Pa deuaz ar maro d'he dud, ho danvez a gouezaz etre he zaouarn; met e leac'h kemeret ganto he blijadur, Nikolas a gavaz guell ranna an arc'hant etre ar beorien. Klevet a reaz hano divar benn eun dijentil paour euz a gear, hag a oa varnez lezel he deir vere'h iaouank da vont da ren eur vuez a skouer fall, abalamour n'en doa ket a beadra d'ho dimezi hervez ho renk. Ar zant a c'houlennoz e pe leac'h edo an dijentil-ze o chom, hag en nozveziou varlere'h, ez eaz da gichen he di; dre ar prenestr a oa choumet digor, e taolaz teir iale'had arc'hant er gampr; an tad keaz a c'hellaz eta rei eun argoulou deread d'he vugale, ha miret outo da vont d'en em goll.

Nebeut bloaveziou goudeze, Nikolas a resevaz an Urziou Sakr, hag en em lakeaz da labourat evit silvidigez an eneou; evit-se, ne esperne netra, nag he boan, nag he anzer, nag he iec'hed. An aotrou 'n eskop a glevaz komz euz ar vad a rea en dro d'ezan, hag a bedaz Nicolas da c'houarn he eskopti, epad eur veach hir en doa da ober. Ar zant ne gredaz ket lavaret nan, hag a stagaz dioc'htu d'al labour; diskouez a reaz kement a

furnez hag a vouisiegez er garg-se, ma teue kalz tud d'he c'houlenn da eskop; met hen o velet kement-se, a guitez ar vro, hag a iez da Jerusalem evit guelel al leac'hioù a zo bet santeleat gant Jesus.

Epad m'edo en eur vag, o veachi etrezek eno, e savaz eur barr amzer spountuz; an avel grenv, o c'hoeza, en doa dichadennet ar mor; al lestr a gemeraz dour, rak goloet e veze gant an tarziou, hag an oll dremenidi a goll'e fizianz, o sonjal e oant varnez beza beuzet. Stra-fuillet oll, hag o krena gant ar spount, e teuont d'en em erbedi ouz Nikolas, ha da lavaret d'ezan savetei anezo, en han' Doue. Ar zant, leun a fizianz e Jesus-Christ, en em lakeaz d'an daoulin, hag a reaz eur beden galounek evit goulenn sikour an env. A veac'h m'oa echuet he beden gantan, ma teuz an avel da derri, hag ar mor da veza ker plean ha ker sioul ha biskoaz.

Ober a reaz ar burzud-se meur a vech all c'hoaz en he vuez, ha zoken goude he varo; abalamour da-ze, ar var-toloded o deuz he gemeret evit ho fatroun, hag a deu d'en em erbedi outan, pa vez goall amzer var vor.

Ar zant-man ne gare nag an henoriou nag ar c'hargou huel, lakeat e oue goulskoud'e da eskop e kear Mir: « P'eo guir eo bolontez Doue, emezan, eo red d'in senti. »

Neuze ec'h en em roaz oll da labourat evit mad he eskopti: eul loden vraz euz he amzer a dremene en iliz o pedi evitan he-unan, hag evit an eneoù fiziet ennan; he zanvez a lakeaz boutin koulz lavaret gant ar beorien, rak ne c'houlenne nemed ober vad d'ezo, hag ho lakât da garet Doue.

Sant Bonavantur a lavar: « Sant Nicolas a rentaz ar » vuez da dri grouadur a oa bet lazec'h gant eun hostiz » fallakr, ha lakeat da zalla en eur c'helorn. »

P'en em zestumaz an eskibien e Konsil Nisee, evit difen ar feiz eneb an heretiked, sant Nikolas a iez di ive, gant an eskibien all. Koueza a reaz klanv en eur zistrei d'ar gear, hag ar c'helou-ze a lakeaz an oll da veza glac'haret; hen hebken a joume laouen ha dienkreuz: diskouez a rea eo kaer mervel pa vez renet eur vuez santel. He ene a nijaz varzu Doue etro ar bloaz 325.

SONJOMP ERVAD :

Pebez vad a ra eun aluzenn great d'eur paour mezuz; nag a c'hrasou a c'hounit an hini a ra kement-se! Sant Nikolas, dre eun aluzen, a viraz ouz eun dijentil eat da baour, dal lezel he vugale da vont d'en em goll: nag a bed ene en deuz diouallet evel-se diouz ar pec'hed marvel!

Bez' ez euz tiegeziou hag a gouez er baourentez, goude beza bet en ho eaz, ar re-ze o deuz mez o tiskouez d'ar re all pegen reuzeudik int, hag aliez e skuillont daelou e kuz. Pebez melkoni ha pebez tristidigez ne zantont-hi ket? E riskl emaint marteze da veza gounezec'h gant an dizesper. Ar seurt tud-se a zo diñ a druez, ha ne oufet ober kaeroc'h aluzen, eget ho zikour.

AR ZEIZVED DEVEZ A VIZ KERZU

SANT AMBROAZ, ESKOP HA DOKTOR

(340-397)

Ambroas a oa gouarner e Milan pa deuaz eskop ar gear-ze da vervel; anavezet ha karet e oa gant an oll abalamour ma rea he labour gant furnez ha lealded.

Pa zavaz menek da henvel eun eskop nevez, an dud a Iliz hag ar bobl ne c'heljont ket en em glevet divar bem hini ebet, ha setu ma savaz trouz etrezo. Neuze Ambroas, karget da lakât ar peoc'h hag an urz vad e kear, a iez d'ho c'haout hag a bedaz anezo, gant dousder, d'en em unani ha d'en em glevet guelloc'h etrezo, evit dibaba eun eskop nevez.

N'en doa ket c'hoaz echuet he gomzou diveza, pa oue guelel eur c'hrouadur o tiredet etrezek ennan, en eur lavaret a bouez penn: « Ambroas eskop, Ambroas » eskop! » An oll a joumaz mantret er penn kenta,

met dont a rejont buan da entent e tlie mouez ar c'hrouadur-ze beza eur vouez euz an env, hag evel dre vuzud, an oll dud a oa eno, a lavaraz teir guech en eur vouez: « Ambroaz, eskop; Ambroas da eskop! »

Ar gouarner, souezet braz, rak ne oa ket c'hoaz badezet, a reaz he zonzj da vont kuit, rak re bounner e kave ar garg-se evit he ziouskoaz. Goulskoude, goude beza pleustret pep tra, e kavaz guelloc'h senti, gant aoun da vont eneb bolontez Doue; reseo a reaz ar vadiziant da genta, an Urziou santel da c'houde, hag e oue sakret eskop. Neuze ec'h en em roaz da bedi a vir galoun, ha da studia ar Skritur Sakr; leun e oa a garantez evit ar beorien hag a druez evit ar bec'herien. Komz a rea aliez d'he bobl divar benn stad santel ar guere'hdet kristen, ha gaelet a reaz gant plijadur eun niver braz a vere'hed o tont d'en em voestla da Zoue, ha da ober veu da joun atao guere'hez. Lakât a reaz c'hoaz kalz pec'herien, kollet en ho dizursiou, da zistrei da Zoue, hag en ho zouez ema sant Augustin hag a deuz goudeze da veza eur zant, hag unan euz brasa doktored an Iliz.

Ar zant a oa leun a zouder e kenver an oll, met goulskoude ne grene ket evit ober he zevel, dreist oll pa veze hano euz gloar an Aotrou Doue. Difen a reaz euz an impalaer Thodos lakât ken he dreid en iliz, abalamour m'en doa kastizet gant re a grisder pobl Thessalonik. Ar prinz, glac'haret, a deuz d'he gaout en eur lavaret: « Anzañ a ran em euz pec'hed braz; met fizianz em » euz da veza pardounet gant Doue p'e guir en deuz » pardounet d'ar roue David. » Sant Ambroas a respountaz: « Pec'hed o peuz evel ar roue David, grit ive » pinijen eveldan. » An impalaer a reaz ar binijen a oue merket d'ezan, chom a reaz eiz miz heb mont en eun iliz. Pa oa achu he amzer, an eskop santel a roaz d'ezan an absolven euz he bec'hed, hag azalek neuze betek he varo, Theodos a zougas atao respet d'ezan.

Sant Ambroas en deuz difennet ar feiz e meur a Gonsil, hag aliez e veze roet d'ezan ar plas kenta, abalamour d'he vouisiegez. Kalz leoriou en deuz skrivet evit displega al lezen gristen; euz ar broiou pella e

teue tud da c'houlenn kuzul digantan divar benn pep tra, met dreist oll divar benn ar pez a zelle euz an Iliz. En despet d'an oll henor a veze great d'ezan, ar zant a joume bepred humbl evel eur c'hrouadur.

KENTELIOU SANT AMBROAS

- I. — Red eo deski peur tevel, evid gellout komz difazi goudeze.
- II. — Eun den sioul, prest da rei sikour d'he nesa, a blij da bep unan hag a c'hounit kaloun an oll.
- III. — Eun den krenv e guirionez, eo an hini a zo treac'h d'he oll ioulou fall.
- IV. — Mar fell d'eoc'h sikour ho nesa, hag ober mad kement labour a reoc'h, grit pep tra evit Doue hag he c'hloar.

SONJOMP ERVAD :

Sant Ambroas a reaz he zevel, en eur zifen euz an impalaer mont en iliz, hag an impalaer a anzavaz he bec'hed, hag a reaz pinijen dirak an oll. Pe hini anezo a zo din da veza meulet? ha daou int din a veuleudi. Evel sant Ambroaz, skandalomp gant dousder ar re m'on deuz da velet varno, pa dec'hont divar an hent mad; hag evel an impalaer, anzavomp hor pec'hejou gant humilite, ha labouromp evit en em ziouall guelloc'h en amzer da zont.

AN EIZVED DEVEZ A VIZ KERZU

Konseption Dinam ar Verc'hez Vari

« Hon tud, eme Bossuet, a ro d'eomp var eun dro ar » vuez hag ar maro; buez ar c'horf ha maro an ene dre » ar pec'hed orijinel: an diou frouezen-ze a zav divar » ar memez grizien. « Ar c'homzou-ze a zo guir euz oll

vugale Adam, abalamour ho zad, penn al lignez, a zo bet pec'her: ar Vere'hez hebken a zo choumet diskla-bez, abalamour ma tlie beza mam da Zoue.

Eun den fur, p'en deuz eul labour braz da ober, a ra he zonzj pell araok. Doue en deuz gullet a oll viskoaz, da lavaret eo, a bep eternite, e tlie an den kenta koeza er pec'hed, ha koll he oll lignez gantan, setu en deuz, a oll viskoaz ive, choazet an hini a dlie rapari ar gaou great d'an dud dre ar pec'hed orijinel. Evit savetei an dud, Doue a dlie rei he Vab; met da zonzjal rapari evit an dud, ar Mab-se, Doue evel an Tad a oll viskoaz, a dlie genel eun deiz evel den, ha beza mab eur vere'h, unan euz bugale Adam.

D'ar vere'h-se, Mari, Mam Doue, an Tad Eternel en deuz roet kement gened, kement gras, kement madelez a c'hell kaerat korf hag ene an den. Rak-se 'ta, ar Vere'hez a zo bet konsevet dinam, heb an distera sklabez euz ar pec'hed. Pi IX en deuz diskleriet ar virionez-se d'an 8 a viz kerzu euz ar bloaz 1854. « Evit brasa gloar » an Drindet Santel, evit brasa honor ar Vere'hez Mam » Doue, dre c'halloud Hor Zalver Jesus-Christ, hini an » ebestel eüruz sant Per ha sant Paol, hag hor galloud » d'comp, e tiskleriomp hag e lavaromp: Ar Vere'hez » Vari, kerkent ha m'euz bet anezi, a zo bet diouallet » a bep sklabez euz ar pec'hed orijinel, er guel a veri- » tou Jesus-Christ, Salver ar bed. Konsepsion Dinam » an Itroun Varia a zo unan euz ar grasou ha done- » zonou kaer roet gant Doue d'ar Vere'hez, ha d'ez » hebken; ar virionez-se a zo bet diskleriet gant Doue » d'he Iliz, hag a dle beza kredet, dindan boan da veza » daonet. »

Tadou an Iliz o deuz meulet ar Vere'hez, diskleriet o deuz eo pur dreist an oll zent hag elez, ema-hi da dosta da Jesus, an den-Doue, he Mab. Lavaret o deuz: pa vez hano euz ar pec'hed, na dleer ket komz euz ar Vere'hez benniget: he ene a zo bet atao skedusoc'h eget an heol.

Ar Vere'hez a zo bet diouallet, er guel a veritou Jesus-Christ, abalamour ma tlie beza he Vam: ne oa ket deread e vije bet Mam Done eur pennadik hebken

dindan galloud an drouk-spered, rak hi eo a dlie flastra d'ezan he benn.

Mar d'eo red kredi, dindan boan a bec'hed, eo bet konsevet dinam ar Vere'hez, ar zent o deuz diskleriet divar benn an Itroun Varia meur a dra hag a zo kredet ive gant an oll gristenien, heb ma vefent guirioneziou a feiz.

An doktored a lavar en deuz roet Doue d'ar Vere'hez, kerkent ha m'eo bet konsevet, kaeroc'h hag hueloc'h gras eget d'ar zent brasa var fin ho buez, hueloc'h gras marteze, eget hini an oll zent asamblez. An oll zantelez a c'helle Doue skuill en ene eur c'hrouadur, a zo bet roet d'ar Vere'hez, deiz he C'honsepsion.

Ouspenn-ze, Doue en deuz roet d'ar Vere'hez skiant ha furnez, en he c'honsepsion memez, setu e deuz gullet, divar neuze, dastum meritou pinvidik braz evit ar baradoz. He ene santelleat gant ar Spered-Santel, sklerijennet gantan, a c'hellaz, divar neuze, ober aktou a feiz, a esperans, a garantez, aktou a zentidigez da volonteaz an Aotrou Doue.

O veza n'e deuz ket kollet ar Vere'hez an distera gras, ha n'e deuz biskoaz great an distera pec'hed, nag a veritou e deuz dastumet! Ar zent a lavar c'hoaz: kerkent ha m'euz bet anezi, ar Vere'hez a zo bet heb an distera tech d'an drouk, d'ar pec'hed. Ar zent brasa, abalamour m'int bet saotret gant ar pec'hed orijinel, a joun hed ho buez grizien ar pec'hed e gueled ho ene; ar Vere'hez n'e deuz ket bet ar c'hrizien-ze.

Ar gristenien o deuz lavaret mil bennoz d'ar Pab p'en deuz diskleriet Konsepsion Dinam ar Vere'hez, met an Itroun Varia he-unan e doa great hano euz ar c'hras kaer-ze p'eo en em ziskouezet da Gatharin Laboure, ha p'e deus diskleriet freaz da Vernadett Soubirous, e Lourd, er bloaz 1858: « Me eo ar Gonsepsion Dinam. »

SONJOMP ERVAD :

Mari a zo eüruz da veza bet konsevet heb pec'hed, met eürusoc'h eo c'hoaz dre ma na deuz great biskoaz pec'hed

ebet en he buez. Ni a deu er bed gand ar pec'hed orijinel, ha siouaz, aliez e kouezomp ive er pec'hed aktuel.

O Guerc'hez sakr, bepred pur ha santel, grit ma vezo hor buez henvel ouz oc'h hini; goulennit evidomp ar c'hras d'en em ziouall diouz ar pec'hed en amzer da zont, ha da ober pinijen evit hor pec'hejou tremenet.

AN NAVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Eloa pe Zant Alar, Eskop

Sant Eloa a zo ganet er bloavez 588, e kichen Limoj. He gerent a roaz d'ezan eur geennadurez kristen, ha dre-ze ho c'hrouadur a deuz da veza ker fur ha ken devot, ma reaz ho joa hag ho flijadur var an douar.

Pa joumaz er gear, achu he studi gantan, he dad o velet he ijin hag he spered lem, hen lakeaz da zeski he vicher e ti eur mare'hadour pinvidik euz a gear, mestr-orfebrer, da lavaret eo, labourer var an aour hag an arc'hant. Eloa ne zalez ket da veza habiloc'h eget he vestr var al labour-ze; met e leac'h en em fougeal, ha klask en em zével dreist ar re all, ec'h en em ziskoueze humbl bepred, hag evel an diveza e touez he vignoumed. Bemdez, en eur labourat en he stal, e save aliez he galoun varzu Doue evit kinnig d'ezan he boan hag he labour; da zul ha da c'houel, e tremene he amzer o pedi, o lenn ar Skritur Zakr, pe o velet ar re glanv.

Ar roue o veza klevet hano euz he spered kaer, a gemeraz Eloa en he balez, hag he gargaz d'ober d'ezhan eun tron pinvidik, arc'hantet hag alaouret. Eloa, goude beza great sin ar groaz, a stagaz raktal d'al labour, hag e leac'h eun tron, a reaz daou gant an danvez a oa bet roet d'ezan: ho daou e oant kalz keroc'h eget an hini a oa goulennet. Ar roue a oue souezet o velet eul labour

ken diez, great ker buan ha ker brao; na c'helle ket choum heb diskouez he anaoudegez vad d'eun den ken desket ha ken humbl er memez amzer: rei a reaz d'ezan madou braz, hag eun ti euz ar re gaera e Paris.

Ar zant a implijaz an darn vuia euz an danvez-se d'ober vad d'ar paour, euz he di e reaz ober eur gouent leanezed hanvet kouent sant Marsial; lakât a reaz ouspenn, sevel iliz sant Paol, hag a zo brema iliz parrez e Paris.

Ar roue en doa lakeat he fizianz ennan, setu perak e kasaz anezan evel kannad da Vro-Zaoz, evit ober ar peoc'h gant ar rouantelez-se. Ar gefridi n'oa ket euz ar re easa da ober, met, dre he zouder hag he leaded, e kasaz mad an traou da benn, hag ar peoc'h a oue sinet, nebeut amzer goudeze. Ar c'helou-ze a reaz kalz plijadur er Frans, ha ne glevet e peb leac'h nemet rei meuleudi da zant Eloa. Met hen a rea skouarn vouzar d'an oll veuleudiou-ze, hag evit diskouez pegement a fae a rea varno, e tec'haz euz a douez an dud, evit en em rei da bedi ha da lenn leoriou santel.

Pa deuzaz sant Aker, eskop Noyon, da vervel, an dud a iliz hag ar bobl euz an eskopti-ze, a c'houennaz sant Eloa da eskop, rak hen, emezo, a zo goest d'ober kalz vad en hon touez. Eloa, o klevet an dra-ze, a zirollaz da lenva, ha da lavaret: « Ar garg-se a zo re zantel evit » eun den hag en deuz bevet beteg hen er bed »; goulenn a reaz da viana, ma vije losket eur pennad amzer gantan evit en em zonjal, hag en em lakât e doare vad da reseo an Urziou sakr. Bloaz goudeze, e oue sakret eskop e Rouen.

Eur vech digouezet en he eskopti, ar zant a brezegaz eneb ar gizioù pañan a oa c'hoaz etouez he bobl, hag a bedaz he dud da heuill guelloc'h al lezen gristen. Eun deiz, e kavaz en eur barrez var ar meaz, tud o tansal da genver gouel sant Per; mont a reaz dioc'htu d'ho c'haout, d'o fedi da ehana. Hiniennou euz an danserien a oue dizuch ha direspect aoualc'h evit kendere'hel, ha Doue, evit ho c'hastiza, a lezaz an diaoul da vont en ho c'horf. Spountet oll, e teuont d'en em erbedi ouz an eskop santel, ha da c'houlen pardoun digantan: neuze,

gant truez outo, e kasaz an drouk-spered pell divar ho zro.

Goude beza gouarnet he eskopti epad 19 vloaz, e kouezaz klanv, ha c'houec'h devez goudeze, d'ar c'henta a viz kerzu euz ar bloaz 659, e varvaz en eur lavaret en doa mall da vont da velet Doue d'ar baradoz.

SONJOMP ERVAD :

Nak a zrouk a ra an dansou! Sant Alar en deus poaniet da derri giz fall an dans en he eskopti, ha Doue en deuz great eur burzud bras evit merka sklear e plije d'ezhan he zervicher. Ar zent oll, e peb amzer, abaoe sant Per Kryzolog betek sant Fransez a Zal hag aotrou persoun Arz o deuz komzet eneb an dansou: sant Jerom a lavare: « An » diaoul eo a ren an dans », ha sant Augustin: « Ti an dans » serien a zo ti diaoulou an ifern. » Na peger guir eo ar c'homzou-ze eneb an dans, hirio dreist oll, pa velomp dansou ken divalo etouez ar iaouankizou! Ia, ar re iaouank a ra an dansou nevez: polka, mazurka, fox-trott, tango, dansou hag a ra d'ezho beza daou ha daou, paotr ha merc'h, an eil harp oc'h egile epad pell amzer, ar re iaouank-se a deu buan ho c'haloun da vreina, ma n'eo ket brein araok. An dansou-ze a zo pec'hed.

AN DEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Ti Santel ar Verc'hez e Nazareth

Santela ti a zo var an douar eo ti bian Nazareth, abalamour m'eo bet ti ar Verc'hez gloriuz Vari. Ennan eo en deus an arc'heal Gabriel diskleriet d'ar Verc'hez leun a c'hras e oa galvet da veza Mam Doue, ennan eo e bet savet Mab Doue, eno eo en deus bevet, kresket ha gounezet he vara divar poan he zivrec'h, etre he Vam

ha sant Joseph, betek m'eo eat da brezeg an Aviel dre ar Judee.

Nak a respet o deus bet atao ar gristenien evit an ti santel! An impalaerez santez Helena, pa roaz he mab Constantin ar peoc'h d'an Iliz, a oue mall ganthi mont da glask guir Groaz Hor Zalver var menez Kalver, met mont a reaz ive da bardouna da Nazareth. Evit merka he respet d'an ti santel, ar zantez a reaz sevel eun iliz vras ha kaer azioe'h ar mogeriou dister o doa diouallet ar Mabik Jesus.

Ar gristenien a ziredas di da bardouna, epad meur a gant vloaz. Pa oue ar Mahometaned mistri ar vro, e freuzjont labour santez Helena, hag e voallgasjont ar bardounerien a deue da honori an ti santel.

Eun devez pe gentoc'h eun nosvez, d'an 10 a viz mae 1291, an ti santel a oue douget kuit gant an elez, ha kaset da Rouniza, eur gearik vian euz an Dalmasi, var ribl ar mor Adriatik. Ar re genta a velaz an ti a oue souezet maro. Lakeat e oa var an douar noaz, heb na vije bet klasket na fount na diazez d'ezhan.

Dirak an or, en diabarz, e oa eun aoter hag a oa bet implijet, sur aoualc'h, da lavaret an oferan. E kichen an aoter e oa eun armel vian, gant eun nebeudik listri kegin da boazat ar boued. Kaera tra a velet en ti a oa skeuden ar Verc'hez gloriuz Vari, skulptret e koad sedr; dougen a rea ar mabig Jesus var he breac'h.

An ti a oa great gant mein hag a oa henvel ouz brik, nemet ne oant ket ker bras ha ker bras evel ma ves ar brik; ne oa euz ar vein-ze e neb leac'h e bro an Dalmasi. Daoust ma oa deut an ti benniget en eun doare burzudus e Rauniza, ar gristenien na gredjont ket dioc'htu e oa ti guirion ar Famill zantel, kas a rejont da genta testou da Nazareth evit anaout ar vironiez.

An testou, tud a benn hag a feiz krenv, eur vech ma ouent distro diouz an Douar Santel, a douaz var an Aviel o doa gnelet e Nazareth diazez an ti a oa bet digaset da Rauniza.

Ar bardounerien a ziredaz d'ober ho devosionou en

ti santel, met a benn tri bloaz, d'an 10 a viz kerzu 1924, an ti benniget a oue douget, dreist ar mor, en eur c'hoat lorvez, e Rekanati, en Itali. Ar bardounerien a deuaz d'an ti santel, rak ar Verc'hez a rea burzudou kaer eno, met laeron a deuaz ive, hag a voalgase ar bardounerien; eaz e oa d'ezho kuzat er c'hoad.

Neuze, a benn eiz miz, an elez a zougaz an ti benniget var eur roz hag a oa boutin etre daou vreur pinvidig, met ar re-man a zavaz buan eun tam kaoz etrezo, divar benn an arc'hant roet gant ar bardounerien. An elez a deuaz neuze da loc'h an ti santel eur vech muioc'h, ha d'he zougen var eun hent braz, tostik ac'hano. Ar Verc'hez Vari ne gar ket an trouz etre an dud.

An ti santel a zo choumet eno abaoue. Ar mogerioù n'int ket plean dre zindan, lod anezho a zo harpet var an douar, lod all a blasou n'int ket, met an ti a jom ploum en he zav; savet euz bet mogerioù marbr guen da ziuall an ti, met pa veze ar voger nevez re dost da voger ti ar Verc'hez, e veze pelleat epad an noz heb sikour den: an Itroun Varia n'e deuz ket ezom euz an dud evit miret he zi soun en he zav. An ti benniget a vel kalz a bardounerien bep bloaz, rak ar Verc'hez a ro eno grasou bras, ha goumit a c'heller eur maread induljansou. An dud devot a laka ho chapeledou en eur skudel vian hag a zo, var a leverer, skudel ar Mabik Jesus pa oa krouadur.

Imach ar Verc'hez a zo bet devet gant an tan goall, e miz c'houevrer 1921, great e oa bet, dioc'h ma lavare lod euz an dud, gant sant Lukas, avieler. Savet euz bet dioc'htu eur skeuden all henvel outi, e koad sedr ive.

SONJOMP ERVAD :

Kaer eo mont da Loretta, rak touch a c'heller eno ouz ar mogerioù o deuz diouallet Mab Doue, pokat a c'heller d'ezho keit-se ac'halen. Doue, en he drugarez, en deuz roet d'ar paour koulz ha d'ar pinvidig, galloud da douch, n'e ket he di eo, met he Gorf hag he C'hoad e sakramant an aoter, da reseo ar C'horf-se enomp evel eur boued burzudus. Resevomp anezhan alies a ma c'hellimp.

AN UNNEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Damas, Pab

(384)

Damas a oa Avieler iliz Sant-Laurans, e Roum, pa oue koundaonet ar pab Liber da vont d'an harlu, abalamou ma tiffenne ar feiz; heuill a reaz ar Pab er meaz euz ar vro, ha choum a reaz gantan eur pennad amzer, evit he harpa en he boaniou, hag he zikour dre he aliou santel.

Pa varvaz ar pab Liber, Damas, koz dija neuze, a oue dibabet evit gouarn an Iliz var he lerc'h. Ar gristenien vad, o klevet ar c'helou-ze, a drugarekeaz Doue, da veza roet d'ezo eur Pastor ken desket ha ken devot, rak ana-vezet e oa gant an oll evit he zantelez hag he spered kaer. An oll a c'houie ive, gant pegement a nerz kaloun en doa difennet ar feiz betek neuze, eneb an heretiked a grede lavaret n'eo ket Jesus-Christ mab Doue.

Goulskoude ar c'helou-ze na blijaz ket d'an oll, hag eun toulladik tud euz a Roum, drouk enno, a damallaz ar Pab nevez e gaou, hag a lavaraz bep seurt gevier divalo eneb d'ezan; mont a rejont zoken betek skei gant he vignoned. Neuze Damas a ginnigaz rei an dilez euz he garg, mar doa red evit kaout ar peoc'h: guell e oa gantan, emezan, choum heb ober implij euz he c'halloud, eged ne doa skuill goad abalamour d'ezan. Met a drugare Doue, ne zalehot ket da anaout ar virionez, ha da velet ne oa great nemet sevel gevier en he eneb. Lezet e oue neuze e peoc'h, hag hen a bardounaz d'he enebourien.

Kenderc'hel a reaz da ober miret lezennou an Iliz, ha biskoaz ne fellaz d'ezan lentât var gement-se. Ober a reaz c'hoaz lezennou nevez, koulz evit an dud a Iliz

hag evit ar bobl, ha beilla a reaz evit ma vijent heuillet gant an oll e peb leac'h.

Evit startât ar gristenien er feiz, ar pab santel a vodaz diou vech eur c'halz eskibien e Roum. En eil konsil (382) e oue gulet sant Ambroaz, eskop Milan; sant Valerian, euz a Akillee; sant Askool, euz a Dessalonik; ha sant Jerom, an doktor brudet. Ar pab a ziskleriaz eno, hag ar c'honsil a-unan gantan, e oa Apolliner heretik. Apolliner a lavare: « Jesus-Christ en deuz keme- » ret eur c'horf evelomp, guir eo kement-se; met n'en » deus ket kemeret eun ene, ha dre-ze, ne c'helle gou- » zany tam poan ebet en he gorf. »

Goude ar c'honsil-ze, sant Jerom a joumaz e Roum evit beza sekretour ar Pab, hag he zikour da respount d'ar goulennoù a veze great d'ezan heb ehan.

Damas a reaz ive sevel diou iliz nevez e Roum; goude he varo, he relegou a zo bet lakeat en unan anezo, hanvet evit-se, iliz sant Laurans in Damaso.

D'an oad a bevar-ugent vloaz pe dost, e koezaz klanv gant an darsien, ha goude beza resevet korf ha goad Hor Zalver Jesus-Christ, e savaz he zaouarn etrezek an env, hag e varvaz en eur ober he beden da Zoue (384).

En Itali, ec'h en em er beder outan evit goulenn beza diouallet diouz an darsien.

SONJOMP ERVAD :

An teodou fall n'o deuz ket espernet muioc'h ar zent eget an dud all, mes ar zent o deuz gouezet gouzanv an dra-ze, en eun doare talvoudeg evito. Gouzanvet o deuz gant peoc'h ha pasianted, en em lakeat o deuz etre daouarn Doue, ha Doue he-unan en deuz ho difennet ha diskouezet ho zantelez.

Mar bezit tamallet e gaou, evel ar zent, lakit ive ho fizianz e Doue; hen a rento d'eoc'h ho prud vad, abred pe zivezad; hag ho tifenno guelloc'h eget na rafac'h hoc'h-unan.



AN DAOUZEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Korantin, Patroun an Eskopti

Korantin, savet e doujanz Doue, a deuz buan da anaout pegen goulo ha pegen didalvez eo plijadureziou ar bed, hag a gavaz guell trei kein d'ezo hag en em rei oll da zervicha an Aotrou Doue. Evit-se ec'h en em dennaz en eul leac'h distro, pell diouz trouz ar bed, en eur c'hoat braz; eno e tremene ha amzer o sonjal e Doue hag o komz outan dre ar beden. Eur japel e deuz merket d'an oll, abaoue an amzer-ze, e pe leac'h edo ermitach ar zant, he feunteun a zo e kichen; eun nebeut bloaveziou a zo, ar japel-ze a zo bet savet a nevez, kaer ha koant, e parrez Plomodiern.

Doue a veille var he zervicher hag a bourvee d'he ezomou. Rei a rea d'ezan bemdez he vagadurez, en eun doare burzuduz: pa 'z ea da gere'hat dour, e kave en he feunteun eur pesk bian, hag a deue d'en em lakât etre he zaouarn koulz lavaret; Korantin a drouc'he eun tam euz ar pesk-se evit he bred bemdez, hag a loske ar pesk en dour adarre goudeze; antronoz pa deue en dro, e kave adarre ar memez pesk en he bez, ha ker iac'h ha biskoaz.

Eun deiz, ar roue Gralon, kollet divar he hent en eur chaseal, en em gavaz e kichen ermitach sant Korantin, hag evel m'en doa naoun braz, e c'houlennaz eun dra benag da zibri, evitan, hag evit an dud a oa ouz he heul. Ar zant a redaz raktal d'ar feunteun, ha goude beza trouc'het eun tam euz ar pesk bian, ec'h en em lakeaz da gempen anezan. Pa velaz ar zant gant he damik pesk, unan euz servicherien ar roue a lavaraz: « Ne ^{ve} » ket re kant tam evel hennez etrezomp, rak ni zo ^{du} gant an naoun. » Met pa oue servichet an tam pesk

d'ezo, e chomjont souezet maro, rag ar boued a greske dre ma tebrent anezan; ha goude ho fred, hini ebet na zonzaz klem da veza bet re nebeut. Gralon he-unan, mantret dirak eur seurt burzud, a fellaz d'ezan diskouez he anaoudegez vad d'ar zant; rei a reaz d'ezan kalz douarou vardro eno, gant ar maner en doa ar roue evit he repui pa 'z ea da chaseal e koat Nevet.

An ermit santel a reaz buan eur gouent euz ar maner, digemeret a reaz eno an dud iaouank o doa e'hoant beza skoliet var skianchou ar bed, hag a glaske dreist oll deski lezennou ar zantelez. Sant Korantin ho renaz gant furnez ha madelez, met o veza ma oa e'hoaz kalz paianed er vro, e rea baleou eur vech er mare, evit sklerijenna an dud. Doue a reaz, meur a vech, burzudou kaer evit sikour an abad santel.

Eun devez m'oa eat Korantin euz Ploumodiern da velet sant Primel, eun ermit koz hag a veve, var a greder, e kichen al leac'h m'ema brema bourk Sant-Thos, en devoue truez ouz an ermit: re hir e ranke mont da glask eur feunteun dour red. Korantin a bedaz Doue, harpa a reaz he vaz var an douar demdost d'an ermitach, ha kerkent e sinklaz eno eun eienen dour sklear. An daou zant en em daolaz d'an daoulin, dioc'htu, hag a drugarekeaz an Aotrou Doue.

Ma oa Korantin, mad da vont da velet eun ermit kollet en douarou gouez, e oa guelloc'h e'hoaz da vont da velet sant Guennole, abad Landevennee, a oa neuze eun tenzor evit hor bro dre ar vuez pinijennuz a rene he-unan, dre ar c'henteliou kaer a roe d'ar iaouankiz var oll skianchou ar bed ha skianchou Doue, dre ar venec'h devot savet gantan, hag a gase ama hag ahont da sklerijenna an dud. Korantin ha Guennole a oa migouned braz, rak bale a reant ho daou var hent ar zantelez, hag ioul braz o doa, an eil hag egile, da zavetei kalz eneo. Ar roue Grallon, e'hoant d'ezan da sklerijenna paianed he rouantelez, ha da startât ar gristenien er feiz, a zonzaz ober eun eskop euz an abad a oa e kouent Ploumodiern, hag ar bobl hag an dud a Iliz a asantez laouen da e'hoant ar roue.

Korantin a oue sakret eta kenta eskop Kemper; ar roue a roaz d'ezan he balez, savet el leac'h m'ema breman an iliz-veur pe iliz katedral, hag ar zant a ieaz di da joum. Korantin a boaniaz neuze, muioc'h e'hoaz eget araok, da gas sklerijen gaer ar feiz dre ar vro, o terri ar gizioù fall, o rei skoueriou santel, oc'h ober prezegennou nerzuz; an dud a deuaz, a nebeudou, da ren eur vuez muioc'h kristen.

Erfin, dinerzet gant he veachou hir hag he labourou tenn, e kouezaz klanv; neuze e c'halvaz he vignouned en dro d'ezan, ha goude beza roet d'ezo he alioù diveza, ha goulennet diganto chom devot atao d'ar Vere'hez Vari, e rentaz he ene kaer da Zoue.

Breac'h deou ar Zant a zo unan euz pinvidigezioù iliz-veur Kemper.

SONJOMP ERVAD :

Doue, en he vadelez evidomp, en deuz roet d'eomp sent, evit beza hon alvokadet var an douar. Hon eskopti, hor parrezioù, ni hon-unan on deuz hor zent patroun en env, prest d'hon difen eneb an drouk-spered, pa zeuomp d'en em erbedi outo. Henoromp eta anezo bemdez, en eun doare benag; pedomp anezo, deiz ho gouel dreist oll; goulennomp dreizo graou Doue, evit ma c'hellimp dispenn ho roudou, hag en em gaout evelde er baradoz.

AN TRIZEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Santez Lusie, Guerc'hez ha Merzerez

Ar zantez-man a oa ginidik euz Syracus, er Sisil. He man a zavaz anezi er relijion gristen, hag he lkeaz abred da garet Doue, ha da gaout kas ouz ar peched.

Lusie a ententaz mad ar c'henteliou kaer a roet d'ezi,

hag a lakeaz bepred he foan da zerc'hel he c'haloun neat diouz ar pec'hed. Ken douget e oa d'ar vertuz, ma reaz veu, heb gouzout dare d'he zud, da joun bepred guer-c'hez, p'edo iaouank flamm c'hoaz. Eur paotr iaouank fur ha pinvidik o veza goulennet Lusia digant he mam, houman a lavaraz ia dioc'htu, heb ober kaoz d'he mere'h. Pa glevaz Lusia kement-se, e lavaraz d'he mam ee'h en em gave re iaouank c'hoaz, hag e oa red gedal; met ne anzavaz ket outi ar veu e doa great.

Neuze he mamm a gouezaz klanv, hag epad pevar bloaz e choumaz var he guele, heb m'o dije gellet ar vedisined ober vad ebet d'ezi. Lusia, glac'haret o velet he mam er stad-se, he fedaz da vont asamblez ganti var bez santez Agatha, da gear Katan, evit goulenn ar pare. Senti a reaz; mont a rejont ho diou da zaoulina var bez ar zantez, hag a greiz m'edo ar vere'h oc'h ober he feden, ar vam en em zantaz pare. Neuze Lusia, leun a joa, a lammaz da boket d'ezi en eur lavaret: « Va mam ger, eur c'hras kaer o peuz bet digant Doue, ha fi » zianz am euz e rooc'h d'in ive ar pez a c'houleunan » diganeoc'h, en he hano: ho pedi a ran da rei d'ar » beorien ar pez o poa lakeat a gostez evit va argoulou, » rak m'em euz great veu da joun atao guere'hez. »

Ar vam a respountaz: « Va merc'h, ho peadra a zo » eat var gresk abaoue maro ho tad, he rei a rin oll » d'eoec'h, mar oc'h euz c'hoant; met miret a rin va » feadra va-uman betek va maro; da c'houde, c'houi a » raio ar pez a blijo d'eoec'h. » Ar vere'hez iaouank a lavaraz neuze gant dousder ha furnez: « Ar re ne reont » vad d'ar paour nemet goude ho maro, ne reont diouer » ebet e guirionez, rei a reont ho zraou pe ne c'hellont » mui ober implij ebet anezo. » Ar vam, gounezet gant komzou he mere'h, a reaz eveldi: rei a rejont, e berr amzer, ar peb brasa euz ho danvez d'ar beorien ha d'an ilizou.

Pa velez guerza danvez Lusia, an den iaouank paian en doa sonj mont ganthi, a redaz buan da ziskleria d'ar gouarner e oa Lusia kristenez.

Galvet kerkent dirak ar varnerien, Lusia a oue roet

arz d'ezi da adori an doueou. Met hi a respountaz: « Ne » anavezan, ha ne adoran nemet eun Doue, Oll c'hal- » loudek; d'ezan em euz kinniget ha roet va madou, » ha ne c'houleunan ket guell eget rei d'ezan ive va » buez. » — « Ma ne zentit ket, eme ar gouarner, me » a raio d'eoec'h divoaska ar poaniou krisa. — Ar poa- » niou a c'houzanver evit Jesus-Christ, eme ar zantez, » ne ouffent ket ober aoun d'he verzerien, nag ober » d'ezo chom heb komz, rak hen en deuz lavaret ar » c'homzou-mon: pa viot dirak ar varnerien, n'eo ket » c'houi eo a gomzo, met ar Spered-Santel eo a gomzo evidoc'h. — Kredi a rit 'ta, eme ar gouarner, ema ar » Spered Santel ennoec'h ?

» Ia, kredi a ran, emezi, ema ar Spered-Santel o » chom e kaloun an dud just ha dibec'h. — Mar dema » ar Spered Glan en ho kalon, emezan, bremaik ne vezo » ket ken »; ha var an heur e reaz kas Lusia er eun ti fall.

Elez Doue a zifennaz he zervicherez; den na gredaz touch outi. Neuze ar gouarner a reaz ober eun tantad, ha teuler ar zantez ebarz, evit beza devet ez-veo; met Doue a veille varnezi atao, hag a viraz ouz an tan d'ober drouk ebet d'ezi. Ar gouarner kounnaret, hag er meaz anezan he-uman, a lakeaz neuze he dibenna: he merzerenti a erruaz er bloavez 303.

SONJOMP ERVAD :

Eüruz ha mill guech eüruz ar re a zo pur ho c'haloun, rag ar Spered-Santel a zo enno; met gualheur ive d'an eneou a zo e stad a bec'hed, rak an diaoul eo a zo o rer enno.

Kaer en defe ar bed, ar c'hik hag an drouk-spered ha tenti hag hon alia d'ober an drouk, ne c'hellint ket hon akât da goueza er pec'hed, ma ne fell ket d'eomp; rak an tentasion n'eo ket ar pec'hed eo, pell ac'hano zoken, p'eo guir e ro tro d'eomp da c'hounit eur gurunen gaer a baradoz.

AR PEVARZEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Spiridion, Eskop

Ar zant-man a oa ginidik euz enezen Chypr, ha goude beza resevet eun deskadurez kristen, e tremenaz he iaouankiz o tioull an denved. Chom a rea aliez he-unan var ar meaz hed an deiz, hag evit kaout berroc'h he amzer, ec'h en em lakea da bedi, ha da gana meulendi da Zoue ha d'ar Verc'hez Na skuize morse, o sellet ouz an traou kaer a vele en dro d'ezan, hag en eur zellet ouz an heol hag ar mor, ne c'helle ket miret da lavaret ar c'homzou-man: « Na Doue a zo braz ha gal- » louduz! »

An dud a anaveze ar pastor denved paour-ze, a joume souezet o klask entent penaoz e c'helle beza ken laouen atao, ha ren eur vuez ker santel; e nebeut amzer e savaz brud anezan e peb leac'h. Doue a deu avechou da skuill evelse he c'hrasou var an dud distera a zo er bed, evit sevel anezo dreist an dud desket hag ourgouilluz, ha diskouez, en doare-ze, eo hen mestr an oll.

Eskop Tremithont, en enezen Chypr, o veza deut da vervel, an oll a c'houlennaz Spiridion d'ho ren. Ar zant a c'hinaz da genta, ne oa ket gouizieg aouale'h var he veno, met plega a reaz da volonteaz an Aotrou Doue. Eur vech ma oue eskop, e kreskaz he binijennou, hag e renaz eur vuez santeloe'h eget araok: Doue a reaz d'ezan ober burzudou braz.

Er bloaz 304, an impalaer Maximin a reaz brezel d'ar relijion gristen, ha Spiridion a oue diskuillet gant ar re genta, ha prizouniet. Klasket e oue he c'hqunit da ginnig ezans d'an idolou, met an eskop santel a joumaz stard en he feiz. Neuze e oue kollet d'ezan he lagad deon, ha trouc'het he jaritel gleiz; da c'houde e oue

kasat da labourat er mengleuziou, asamblez gant eun toullad kristenien a oa bet merzeriet evel dan. Pa deuaz ar maro da Vaximin, ar zant a c'hellaz distrei da Tremithont.

Doue neuze, evit diskouez he zantelez, a reaz meur a vuzud dreizan, evel an hini a reaz e Konsil Nisee, er bloavez 325. Sant Spiridion a oue unan euz an 318 eskop en em vodaz eno evit difen ar feiz katholik.

Hogen, eno e oa ive eun den gouizieg hag a heuille falz kredennou ar baianed, hag hini ebet euz an dud desket a oa eno, na c'helle displega d'ezan freaz aouale'h ar virionez, nikun na c'helle lakât ar guir sklerijen da bara splam dirak he spered.

Spiridion a zavaz erfin; en em lakât a reaz da gomz eun ha didroidel d'ar falz doktor ourgouilluz-se, mes he gomzou o doa eun nerz divin, hag an den-ze, ken aheurtet diagent, a zigoraz he zaoulagad d'ar virionez, hag a anzavaz eno, dirak an oll, en doa kerzet betek neuze var hent ar gaou. Ar spered braz-se a rentaz mil bennoz d'an eskop santel en doa he sklerijennet, hag he c'hounezet evel-se da Zoue.

Spiridion a ieaz c'hoaz d'eur c'honsil all, da hini Sardik, met prest goude e kouezaz klanv. O velet ar maro o tostât ec'h en em erbedaz ouz Doue hag ar Verc'hez; sonjal a rea ive evelato en he bobl muia-karet, hag he gomzou diveza a oue evit he dud: « O pezet » karantez, emezan, evit ar beorien; » en eur lavare ar c'homzou-ze, he ene a nijaz d'ar baradoz da gemret perz e gloar ar zent, er bloaz 344.

SONJOMP ERVAD :

Spiridion, o fiourall he zened, n'en doa ken c'hoar, nemet servicha Doue er stad-ze, ha Doue en deuz gret eun eskop santel anezan! Hor buez a zo eta etre daouar Doue, hag evel-se, tud iaouank, n'en em lakit ket e poan a glask gouzout petra viot eun deiz. Pedit Doue da verk d'eoc'h ar stad a vuez en deuz c'hoant a gemerfec'h; gopennit kuzul digant ho tud, ha digant ho tad kovesour, ha da c'he-

dal, grit ho tever, penn da benn, er stad m'emaoc'h ennan. Ha c'houi, tadou a famill, n'en em dregasit ket re evit gouzout petra deuo ho pugale da veza. Servichit mad an Aotrou Doue, lakit ho pugale d'hen ober ive, ha Doue ho sikouro da bourvei d'ho ezomou.

AR PEMZEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Gunthiern, Patron Langolen

Gunthiern a oa roue e tu er C'huz-Heol euz a enez Vreiz, galvet brema Bro-Zaoz. Met, eun deiz, e teuz d'ezan a berz Doue ar zonz d'ober fae var oll henoriou ar bed evit goumit kaeroc'h kurunen en env; ha ker buan, heb lavaret ger d'he zervicherien na d'an dud a lez, e tilezaz he rouantelez hag ec'h en em dennaz en enez Groaz, demdost da borz an Oriant, a zo en eskopti Guened.

Et leac'h distro-ze e choumaz meur a vloaz, anavezet hebken gant ar besketerien divardro. Goulskoude, dre hir amzer, ar brud euz he viraklou a ieaz betek daou zjgentil, mistri an enezen, a reaz hiviziken stad anezan, hag a gomzaz divar he benn da C'hralon, a oa neuze o c'houarn Breiz-Izel. Hema a gemennaz d'ar zant dont d'he gaout, ha Gunthiern, o veza deuet, a blijaz kement d'ar roue, ma oue roet d'ezan eun dachen er plas a zo bet divezatoc'h savet ennan kear Kemperle.

El leac'h-se, hanvet neuze Anaurot, etre an diou ster, an Isol hag an Elle, ar prins santel a zavaz eun ermitach, hag a zeskaz skiant ar zent d'an dud a deue da c'houlou digantan eun ali fur benag, pe o doa c'hoant dispenn he roudou. Met Gunthiern ne joumaz ket eno da vervel.

D'ar mareou-ze, Guenediz a oa varnez kaout dienez,

abalamour d'ar prened a zebre an ed e glaz. Oc'h anaout santelez Gunthiern, kount Guened a gasaz tri voure'hiz euz a gear da lavaret d'ezan, en han' Doue, sellet a druez ouz ar vro.

Ar zant a roaz d'ezo dour benniget da deuler gant eur sparf var ho farkeier, hag ar prened a varvaz raktal. Dre anaoudegez-vad evit eun henvelep burzud, ar c'hount a roaz da C'hunthiern, eur verouri hanvet Ker-vegnak, e kichen an Oriant.

Ar zant a lavaraz eta kenavezo d'he ermitach, met lagad an Aotrou Doue a bare gant plijadur var ar c'horn douar en doa labouret; divezatoc'h e oue savet eno eur gouent euz ar re vrasa. Abati ar Groaz Santel, e Kemperle, renet da genta gant sant Gurloes, a zo bet savet el leac'h m'oa bet ermitach sant Gunthiern; ar venec'h a zo bet en abati-ze o deuz sklerijennet ha santeleat ar gristenien tro var dro.

Gunthiern a dremenaz, var a greder, an nemorant euz he vuez e Kervegnak, eno eo e varvaz hag e oue sbeliet. Pa zirollaz ar baianed gant an tan hag al laz var Vreiz, relegou sant Gunthiern ha kalz re all a oue kaset ha kuzet en enez Groaz; eno int bet kavet vardro pemp kant vloaz goude (1070).

Darn anezo a oue neuze douget da abati Kemperle, ha lakeat er chapel savet d'ezo e liorzou ar gouent.

Chapel Lok-Gunthiern, en enez Groaz, a verk atao d'an dud plas ermitach kenta ar zant; evelato, muia m'eo henoret brema, eo e parrez Langolen, e deuz her c'hemeret da Batron.

SONJOMP ERVAD :

Sant Gunthiern a zilezaz he gurunen a roue, kenta ma teuz d'ezan ar zonz-se euz an env, ha ne lavaraz ger da dud he balez en aoun da veza distroet ganto diouz servich Doue. Ped guech ne zeu ket mouez hor c'houstianz da lavaret d'eomp e ve mad distaga hor c'haloun diouz danvez, plijadureziou hag henoriou an douar! hag e reomp atao skouarn vouzar. Marteze, evit kaout digarez da genderc'hel, e c'houlennomp kuzul digant tud ar bed, ha ni o c'houzout ez eont eneb kenteliou an env. Pebez kem etrezomp-ni hag ar zent!

AR CHOUEZEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Euzeb, Eskop ha Merzer.

Ar zant-man, ginidik euz ar Sardaign, a deuz er bed, er bloaz 286.

Goude gras ar vadiziant, kaera tra a e'hell ar yugale kaout, er bed-man, eo eun tad hag eur vam gristen. Mam Euzeb a oa eur vaouez a feiz; deski a reaz d'ezan abred karet ha servicha an Aotrou Doue.

Krog e oa en he bemp bloaz var 'n ugent, pa oue merzeriet he dad, dre urz an impalaer Dioklesian, abalamour na felle ket d'ezan trei kein d'ar relijion gristen.

O sonjal en he dad, maro dre garantez evit Hor Zilver Jesus-Christ, Euzeb n'en doa ken c'hoant nemet en em rei oll da Zoue. Mont a reaz eta gant he vam da Roum, hag eno, e poaniaz da zeski an oll skianchou, evit ma vije easoc'h d'ezan goude, labourat evit gloar Doue ha silvidigez an eneo.

O veza bet beleget, ar Pab her c'hasaz da gear Verseill, er Piemont. Eno, abarz nemeur, e oue ken istimet gant an oll gristenien ha gant an oll veleien, ma c'houlenjont anezan da eskop. Ar Pab a roaz d'ezo ho goulenn. Eur vech sakret eskop, Euzeb a gemeraz ar brasa soursi euz an eneo fiziet ennan. Kenta tra a reaz, a oue dastum oll veleien kear Verseill, er memez ti gantan; eno e vevent etrezo, evel ma vev ar venec'h en ho c'houlenchou. Meur a vech en deiz, hag en noz zoken, e kanerf meuleudion an Aotrou Doue: pinijennou a reant, gant an dra-ze, evit kaout digant Doue distro ar bec'herien.

Euzeb he-unan a roe d'he veleien ar skouer euz an oll vertuziou; nag a boan a gemere gant ar gristenien euz he Iliz ! Meur a vech er zizun, e prezege d'ezo, hag he gomzou nerzuz a iea betek ar beo er c'halonou.

E berr amzer, e kear Verseill, ne oue mui nemet kristenien vad, hag o doa c'hoant dispenn roudou ho eskop hag ho beleien.

D'ar mare-ze, eur rumad heretiked, hanvet Arianed, a rea kalz a freuz e touez ar gristenien. Dre ho falskenteliou, e lakeant eun niver braz a eneo var herit an ifern. Evit ho diarbenn, ar Pab a vodaz eun toullad eskibien e kear Milan, hag Euzeb a iez d'ar c'honsil-ze, petra benag ma c'houie ervad e vije he-unan e riskl braz, er gear-ze.

Evit guir, an Arianed o doa dija chachet a-du ganto an impalaer Konstans, ha ne glaskent nemet lakat koundaoni sant Athanas, eskob ha patriarch Alexandrii, abalamour m'en doa he-unan diskouezet, ker sklear hag an deiz, n'edo ket ar virionez ganto. Ker-kent ha ma tigoraz eta ar c'honsil, e Milan, an impaler Konstans a c'houlennaz digant an eskibien ma vije koundaonet sant Athanas.

Euzeb a zavaz raktal he vouez hag a ziskleriaz ne zinfte biken ar zetans-se, kountrol-beo d'ar feiz ha d'al lealded. Evit ar c'homzou kalonek-se, Euzeb he-unan a oue koundaonet d'an harlu gant an impalaer Konstans. Kaset e oue, dre he urz, da gear Sithopolis, er Palestin.

Eno, an Arianed a reaz d'ezan gouzanv bep seurt poaniou kasaiuz. Taolet e oue ganto en eun toul kuz ken enk ma ne c'helle ket choum en he zav ennan; gant an dra-ze, he c'hoardou a veze heb ehan o skei gantan. An eskop santel a oue lezet eun dro, epad pevar devez dioc'htu, heb eun tam bara zeac'h da zibri, nag eur banne dour da eva: he enebourien n'o devije ket great kement all d'an torfetour brasa. Evelato, e kreiz he oll boaniou, an eskob santel ne loskaz biskoaz an distera klemmaden.

An impalaer Konstans o veza deut erfin da vervel, Euzeb a c'hellaz distrei da gear Verseill. Pa erruaz en he eskopti, an oll he zigemeraz gant joa ha respet, abalamour m'en doa gouzanvet poan evit difen ar feiz hag an Iliz santel.

Ep ad dek vloaz c'hoaz, Euzeb a labouraz, e Verseill,

da c'hounit eneou da Zoue; met an Arianed o doa atao ar brasa kasouni outan. O veza deut adarre da veza ar vistri er vro, petra benag m'en doa dija ar zant pemp bloaz ha pevar-ugent, e krogjont ennan, ha goude beza he stlejet didruez dre ruiou kear, e lazjont anezan a daoñiou mein.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en deuz gouzanvet bep seurt poaniou, ha bep seurt dismegansou, kentoc'h eget rei he zinatur da gondaoni eun eskop, sant Athanas. « An dra-ze, emezan, a vije bet » kountrol d'ar feiz ha d'al lealdet. »

Hirio, siouaz! nag a gristenien hag a ro ho zinatur, ho mouez, deiz ar votadek, evit diskar ar feiz hag an Iliz, er vro. Ar pec'hed-se a zo eur pec'hed braz, eur pec'hed marvel. Ia, en despet da gement a lavar an dud difeiz hag an hanter gristenien, pec'hed marvel eo voti evit ar re a ra lezennou fall, da lavaret eo, lezennou eneb Doue hag an Iliz; pec'hed marvel eo voti evit ar re a ro galloud d'ar c'hannadet a ra ar seurt lezennou-ze.

AR ZEITEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Judikael, Roue ha Manac'h

Judael, roue an Domnonee, da lavaret eo, roue var douar eskoptiou Leon, Treger, Sant-Malo ha Dol, a varvaz var dro ar bloaz 605: c'houezek mab ha pemp merc'h a joume var he lere'h, hag ar c'hosa anezo a oa Judikael.

Retvoual, rener Haelok, unan euz ar c'houezek mab, a zonzaz evelhen: « Ma laz an pemzek paotr all, e » vezo eaz d'in ren Breiz en hano va fillor », hag e klas-kaz ober an taol fallakr-ze. Judikael, evit savetei he vuez, a redaz da gouent sant Neven e Gael, hag a c'hou-

lenmaz beza digemeret etouez ar venec'h. Etretant, Retvoual a laze seiz euz bugale ar roue, met c'houec'h all a oue saveteat, evel Judikael.

Retvoual ne vevaz ket pell goude he dorfet, met he fillor, Haelok, a oue eun den kriz ha fallakr evel dan: ren a reaz ar vro evel eur paian. Sant Neven a reaz d'ezan rebechou ha gourdrizou, met ar roue ne rea van. Haelok a oue skoet gant dourn Doue er vech kenta, met ne jenchaz ket buez; pa oue skoet enn eil tro, e tistroaz da Zoue a vir galoun. Epad an amzer-ze, Judikael a rene er gouent eur vuez euz ar re zantela, pini-jen ebet ne oa re galet evitan. Eun nosvez ma oa eat sant Neven d'ober eun dro e liorz he gouent, e velaz ar manac'h Judikael diskennet e dour sklaset ar ster da bedi: er goany kalet edot neuze.

Pa zistroaz Haelok da Zoue evit mad, Judikael a oue pedet da bignat var dron rouaned Breiz: hen, ar c'hosa euz bugale ar roue koz, brudet he-unan dre he furnez, he zeskañdurez, he zantelez, a oa ar guella da freuza al labour fall en doa great he vreur epad meur a vloaz, ha da lakât an urz, ar peoc'h hag al lealdet da ren a nevez er vro. Rei a reaz da Haelok eul lodennik euz ar rouantelez, heman a renaz mad anezi; Judikael he-unan a oue rener ar Vreiziz all.

Judikael a zo marteze kaera roue en deuz renet Breiz: krenv ha dispount en emgann, kaloun vad d'ezan, truezuz d'ar paour, leal e kenver an oll, guest da zifen he vir ken aliez guech ha ma klasket goaska ar Vretoned.

Mare'heien euz a Vreiz o veza great skrab e bro ar Fransizien, heb gouzout dare da Judikael, ar roue Dagobert a gasaz klem betek roue Breiz. Judikael a ieaz seder ha dispount, gant eun toulladik mad euz he dud a vrezel, betek lez roue Paris, d'en em glevet gantan. Dagobert a roe skouer fall d'ar mare-ze, setu perak roue Breiz, e leac'h kouskat en he di, a ieaz da di sant Ouen, a oa kenta ministr gantan. An daou roue en em glevaz, rak sant Ouen a zikouraz kalz Judikael evit maga ar peoc'h etre Fransizien ha Breiziz.

Eun dra a ziskuillo d'omp madelez Judikael. Eun

devez ma rea hent gant he dud, var vare'h eveldan, e kavjont eur ster vraz da dreuzi var neun, hag eun den lor o e'houlen he gas d'an tu all. An dijentiled, gant aon da baka ar c'hlenved, a dreuzaz heb sellet ouz ar paour keaz, met Judikael, divarlerc'h, a reaz d'an den lor azeza koumpes var he vare'h, hen a zavaz da c'houde en he gichen. Treuzi a rejont ho daou assemblez. Hag ar paour, deut da veza kaer evel an deiz, a gomzaz evel-hen: « Eüruz oc'h, Judikael, met eürusoc'h e viot » c'hoaz, rak abalamour m'eoec'h euz va henoret var an » douar, me ho c'henoro em baradoz. » Ar paour a oa Hor Zalver he-unan, eme an historiou koz.

Brokuz e kenver an oll, ar roue a zigemere mad kement hini a zeue d'he velet: met ma roe boued c'houek d'ar re a veze azezet ouz he daol, ar roue he-unan ne zebre nemet boued gros, na eve nemet dour; kouskat a rea aliez var ar c'halet.

Dimezet e oa, ha Doue en doa roet d'ezan bugale, met keuz en doa atao d'he gouent, hag e reaz he zonz da daoler he gurunen hag he vantel a roue evit guiska a nevez sae ar veece'h. Haelok a oa maro pell amzer a oa; evit ma vije renet mad Breiziz var he lere'h, Judikael a 'z eaz da gaout daou euz he vreudeur, an eil goude egile, met int-hi a lavaraz nan.

Eun trede breur a asantaz reseo ar gurunen aour, pa 'z eo guir bugale Judikael a oa re iaouank c'hoaz, hag ar roue koz a zistroaz da viska sae c'hros ar veece'h, var dro ar bloaz 640.

Eun nebeut bloaveziou goude, Judikael a varvaz er gouent-se, goude beza bet koulz manac'h ha m'oa bet roue mad.

SONJOMP ERVAD :

Tad ar zant-man en devoue eur c'hrouadur var 'n ugent. Na kaera famill! Pebez joa, pebez honor evit eun tad, eur vam guelet en dro d'ezo kement a vugale, dreist oll pa vezont savet e doujans Doue! An tiegeziou a zo kalz bugale enno, a zo benniget gant Doue.

En hon amzer, siouaz! e veler aliez goall c'houlo an tiez: eur bugel, daou vugel, ha netra ken. Aon zo rak ar boan, an diezant, c'hoant a zo lezel gant ar vugale aleiz a zavaz. Kement-se n'eo ket mad, pa 'z eer eneb lezen Doue er stad a briedelez, pa virer ouz ar vuez. Ententit mad ar c'homzou-ze: pa virer ouz ar vuez. Savit mad ho pugale: lod anezho a vez kollet dre faot he zud, abalamour ma vez roet re a arc'hant d'ezho pa 'z eont d'eur foar pe d'eur pardon: deski a reont forani hag ober implij fall euz ho danvez. Taillit d'ezho, roit d'ezho aoualc'h evit dere'hel ho renk, ha netra ken.

AN TRIVAC'HVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Budok pe Veuzek

Mab da zantez Azenor, ar zant-man a zo patrour meur a barrez euz hon eskopti: Porspoder, Plourin-Guitalmieze, Beuzec-Cap, Beuzec-Conk ha Tregarvan; kement-se a ziskouez an devosion o doa hon tud koz evitan.

Santez Azenor, he vam, a zo ker brudet all. Bez 'ez eo bet patrour e diou pe deir iliz; feunteuniou e Lesneven, e Goulien a zo c'hoaz en he hano, hag unan euz touriou koz kastell Brest a zo hanvet atao tour Azenor, abalamour, mechans, m'eo bet klozet enni gant he zad.

Guir eo, ar vuez-se a c'hell beza bet kaereat gant ar re o deuz skrivet anezi; met diskouez a ra ker sklear madelez an Aotrou Doue e kenver he zervicherien, ma lakeomp anezi ama.

Azenor, merc'h pennherez prins Leon, a oa eur brinsez kaer ha devot; beva a rea gant he zad e kastell Brest. Komt Goelo, mestr var bro Sant-Briek, he c'houlennaz da bried; Azenor, goude beza lavaret nan da genta, abalamour m'e doa c'hoant choum guerc'hez,

a asantaz evit plijout d'he zad hag a ieaz da jom d'eur maner a oa da Gont Goelo, e Kastell-Audren (Château-Audren.) An daou bried a vevaz da genta eüruz, e doujans hag e karantez Doue.

Prins Leon, intanv p'en doa dimezet he verc'h, a generaz da bried eun dimezel a renk huel, dous-mel da velet, mes griet he ene gant ar fallagriez. Tamall a reaz, eun nebeut miziou goude he eured, Azenor da veza eat eneb he dever a c'hreg kristen. Azenor, var falz-testeniou he lez-vam, a oue koundaonet; ne oue ket lakeat d'ar maro, abalamour d'he stad, met klozet e oue en eun donnel, ha lakeat var ar mor e Brest. Dioc'h ma lavar eur verz koz Budok a c'hanaz en donnel, ha prestik goude, ar varriken a stokaz ouz aod an Irland: eun eal eo a vagaz ar vam dre vuzud, hed ar veach. Ar porzik mor a roaz guasked d'ar zant ha d'he vam a vez hanvet Aber vrao; er c'hresdeiz euz an Irland eman.

Budok a oue savet eno; he vam a c'houneze, divar boan he divrec'h, bara d'ez i ha d'he c'hrouadur; ar paotrik a oue desket d'ezan, abred, karet Doue, lenn ha skriva. Goulen a reaz beza manac'h er gouent m'oa bet skoliet emmi, ha pa varvaz an abad, e oue lakeat da ren ar gouent.

A benn eun nebeut amzer, eun eal a deuas, aberz Doue, da c'houre'hemen d'ezhan mont da Vreiz-Izel. Budok a zentaz raktal, sevel a reaz el laouer vean a oa he vele, hag e kerzaz dre c'hvas Doue var an dour betek Porspoder: eno ar vag a c'hiz nevez a zouaraz. Eur c'halz euz tud Porspoder a oa bet badezet d'ar mare-ze, meur a hini evelato a oa c'hoaz paianed: ar zant goude beza savet eun ermitach en ho zouez ha bevet ganto eur pennad, a reaz d'ar peb brasa anezho ren eur vuez kristen.

A benn bloaz, ar zant a belleaz diouz ar mor, hag a zavaz eun ermitach e Plourin; eno, evel e Porspoder, e kenteliaz ar c'harteriz. Eur maread tud a zelaouaz kelennadurez an den santel, met hiniennou a enebaz outhan, hen neuze a dec'haz pell pell hag a glaskaz eul leac'h goudor ha distro: enez Laure, e guasked enez

Brehat, en eskopti Sant-Briek. Eno, distag diouz traou ar bed, ar zant a zavaz adarre ermitach ha chapel. Tud yaouank a deuaz heb dale euz an douar bras da c'houlen beza kenteliet gant an ermit santel: hen neuze ho renaz var hent an deskadurez ha var hent ar zantelez.

Ar brudeta euz he skolaerien a zo bet sant Guemole; choumet eo e skol Budok epad pevarzek vloaz.

D'he vloaz var 'n ugent, Guemole, var urz eun eal, a lavaraz kenavezo d'he vestr santel, hag a ieaz var zouar eskopti Kerne, gant unnek manac'h all. Budok, koz braz d'ar mare-ze, a oue rannet he galoun gant an disparti, met soubla a réaz da volontez an Aotrou Doue. Mervel a reaz en he enezen, goude m'en devoue roet eur bennoz diveza d'he ziskibien. Hervez an historiou guella, eur Budok all, sant hen ive, eo a zo bet arc'heskop e Dol, hag a zo marvet eno, er bloaz 634.

Ar vartolodet a zo bet devot atao d'hor zant Budok, abalamour m'eo bet diouallet diouz ar mor en eun doare ker burzuduz.

SONJOMP ERVAD :

Buez ar zant-man a ziskouez d'comp gant pebez evez e tiouall an Aotrou Doue ar re a zo en em roet d'ezan. Sant Budok pe Veuzek, hanvet evelse abalamour m'eo bet varnez beza *beuzet*, en deuz bet atao fizians en Aotrou Doue, poaniet en deuz da sklerijenna ar muia m'en deuz gellet a dud var ho deveriou e kenver Doue, ha Doue en deuz sikouret anezan, great burzudou braz evitan.

Lakeomp, ni ive, hor fizianz en Aotrou Doue.



AN NAONTEKVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Edern, Ermit

Dioc'h ma lavare ar skridou koz a oa e Plouedern araok bloavez ar freuz braz 1793, Edern a oa ganet e Breiz Veur, hanvet brema Bro-Zaoz, var dro ar bloaz 900.

Treuzi a reaz ar mor evit dont en hor bro, ha douara a reaz demdost da Bloare. Gant aon da veza direnket gant an dud divar he bedennou, Edern a dec'haz dioc'h an aod, hag a iez da ober he ermitach e lec'h m'ema breman ar Yeue'h.

Ar zant na joumaz ket pell eno, hag a iez doun doun en douarou, adreuz Plogonec ha Landrevarzec, chom a reaz el leac'h m'eo savet breman ar bourg a zoug he hano: Edern.

An ermit a renaz eno buez an oll ermited en hor bro: pa veze savet eul lochen evit an den hag eun orator evit an Aotrou Doue, e veze torret ha difraostet douar eun dachen tro var dro. An douar labouret a roe ed ha legumach, hag an ermit a c'helle kaout bara da zebri, ha terri naoun ar paour.

Evelato, labour braz peb ermit a zelle ouz an ene dreist oll, ober a rea piniñ, ha rei a rea kalz amzer d'ar beden.

Edern a rene ar vuez-se en he ermitach, hag a oa eno sioul ha didrouz, betek an devez ma savaz etre he amezeien hag hen. Ar zant en doa eur vioc'hik, hag houman a iea avechou da beuri e parkeier an amezeienze. Ar re-man, tud gros ha dic'hras, a reaz rebechou pounner d'ar zant, hag a zougaz klem eneb d'ezan dirak aotrou ar C'histinit.

An Aotrou, leun a zrouk, a reaz d'he vevel mont gant

he chas varlere'h ar vioc'h, hag ober d'ezo kounnari outhi, pa oa en unan euz parkeier ar maner. Ar chas a zaillaz var ar vioc'h, a grogaz iud emni, hag he lezaz maro mik var an dachen.

Doue goulskoude, en he vadelez, a rea d'an ed poulza drusoc'h ha kaeroc'h el leac'h ma oa bet ar vioc'h o peuri, met an Aotrou na zonzaz ket er burzud-se.

Distranset divar he bedennou gant an trouz hag ar freuz, ar zant a deuz er meaz euz he lochen, hag a velaz ar vioc'h paour, leun c'hoad, astennet heb buez var ar park. Dispount ha seder, Edern a c'halv he vioc'h, ha kerkent houman a zav leun a vuez, hag a ia var eün da gaout he mestr.

Divar an taol-ze, ar zant a lavaraz kenavezo d'he amezeien fallakr, hag a iez da veva, he-unan gant Doue, e kreiz etre ar Meneziou Du ha Menez Are, e kichen al leac'h m'ema breman Lannedern. Eno, e koat ar Roc'h, harp oc'h eur feunteun, Edern a zavaz he ermitach, hag, e kichen, eun orator en honor d'ar Verchez Gloriuz Vari.

Gant an amzer, al lochen a zo kouezet en he foull, met an orator dister a zo hirio eur japel euz ar re gaera: Chapel Itrou Vari Koat ar Roc'h.

Edern a vezaz eno, sioul ha didrouz, anavezet mad gant Doue hag an elez. Eun devez, chas eun dijentil o redet varlere'h eur c'haro, a reaz da heman mont da glask ar guasked e lochen an ermit. Edern a ziarbennaz ar chas kounnaret, hag a roaz repu d'an aneval gouez.

Divar an devez-se, ar c'haro a oue mignoun braz ar zant. Mont a rea da beuri, var an deiz, tro var dro d'an ermitach, ha pa iea an heol da gouskat, duhont, pell pell adrenv torgen Braspartz, ar c'haro a glaske he ribinou da zistrei e kichen he vestr. Eno e kouske dizoursi, heb aon rak ki, na bleiz.

Sant Edern a zo bet eur skouer a basianted. Eun devez ma oa duk Breiz o chaseal e Koat ar Roc'h, e oue kollet divar he hent. Kas a reaz eur floc'h da e'houlen digant an ermit hent ar gear, met Edern a oa neuze o pedi a vir vella, ha ne glevaz ket dioc'htu komzou ar

floc'h. Heman, ter da gounnari, a zistagaz eur javedad gantan. Met ar zant a ginnigaz d'ezhan kerkent he chod all, ker seder ha tra, evit senti ouz lavar Hor Zalver en Aviel.

Ederm n'en em zifenne ket, met Doue hen difennaz, rak ar floc'h, an duk hag ar chascourien a gouezaz dall put en eun taol. Rekour a rejont ar gueleed en dro, pa oant var douar Leon, en eun terrouer hanvet divar neuze Plouedern, abalamour ma savas an duk eun iliz eno, en honor d'ar zant.

Ederm a varvaz d'an deiz kenta a yiz guengolo, e koat ar Roc'h. Teir barrez a zoug he hano, Ederm, Lannedern ha Plouedern. Guelet a reer, e meur a leac'h, patrom ar zant o kerzet, azezet var eur c'haro.

SONJOMP ERVAD :

I. — Setu aze ar pez a c'heller diskleria divar benn buez ar zant-man. N'eo ket eaz, hirio, anaout he vuez penn da benn, ken nebeut ha buez meur a zant all euz Breiz-Izel, rak an dud santel a zo bet stank, guechall goz, en hor bro, hag ar skrivanierien, rouez. Ha seulvui e oa kaer buez an ermited o deuz diazezet hor parrezioù, seulvui ec'h en em guzent, guella ma c'hellent. Na pegen dishenvel e oant diouz eur c'halz euz tud hon amzer, a glask kement kaout brud var ho hano.



AN UGENTVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Malachi, Eskop

(1094-1148)

Malachi a oa ginidik euz an Irland. He dud a oa pinvidig hag a reaz skolia mad anezan; ouspenn-ze, e rojont d'ezan eur gelennadurez kristen.

En he iaouankiz e oue atao fur, humbl ha modest evel eun eal; mont a reaz abred da veva e koumpagnunez eun ermit hag a oa o choum demdost da gear Armagh. Abarz nemeur, an ermit iaouank a oue anavezet gant an dud divar dro; he zantelez a reaz d'eun toullad paotred iaouank all mont d'he heul, evit beva asamblez gantan. Met mar doa santel an dud iaouank diredet eno, Malachi evelato a zervichaz da skouer d'ar re all; eskop Armagh o veza klevet hano euz he furnez hag euz he zeskadurez, a reaz d'ezan reseo an Ursiou Sakr, hag her greaz Aviel en he iliz.

Er garg-se, he vrasa plijadur a oa sikour ar beorien dilezet, ha sebelia ar re varo. D'he bemp bloaz var 'n ugent e oue beleget en despét d'he humilite, ha karget neuze da brezeg an Aviel.

Eur vech beleg, na ehane dre he gomzou hag he brezegennou d'ober vad d'an eneou, ha da c'houmit evelse kalz tud d'ar feiz kristen. Prezeg a rea gant nerz, met ar skouer vad a roe d'an oll a c'houneze da Jesus-Christ muioe'h a dud c'hoaz eget he brezegennou. Evel eun eal e oa ouz an aoter, evel eur zant en he gomzou, hag evel eun abostol e kador ar virionez.

Ar brud anezan a ieaz da bell bro, betek ma teuz eun devez roue Munster, diskaret divar he dron, da c'houlen beva en he gompagnunez, ha deski gantan an doare da veva e guir gristen.

He vuzudou a reaz he henvel da eskop e Konnor, eur gear vian euz an Irland. Klask a reaz tec'het da genta diouz ar garg poumner-ze, met rei a rankaz he asant. Ar zant a velaz neuze e pe stad truezuz e oa ar bobl fiziet ennan, na gavaz en he eskopti nemet tud kris hag hanter c'houez, heb tam relijion ebet koulz lavaret. Ken aheurtet e oant, ha ken digoustians, ma oa deut eur c'halz euz ar veleien da goll kaloun ganto.

An eskop nevez a stagaz a zevri d'al labour; poania a reaz da genta da c'homit he bobl dre he zousder hag he basianted. An dud a joumaz diseblant da genta, met neuze ar pastor kaloumek a dremenaz meur a nosvez o pedi Doue d'ober eur zell a druez var he bobl. An Oll C'halloudek a zelaouaz erfin he bedennou; he dud, tre-c'het gant he basianted, a blegaz d'ezan. Ar c'halonou kaledet-se a zeuaz da denerrât, en em voaza a rejont nebeut-a-nebeut da zelaou mouez ho eskop, da glevet he brezegennou, hag e teujont da gaout respet evitan, d'he garet evel ho zad. Neuze e lakeaz eun urz kaer en he eskopti, ha bez' en devoue, dindan daou vloaz, ar joa da velet ar peb brasa euz he bobl o ren e peb leac'h eur vuez kristen penn-da-benn. O veza ma rea kalz burzudou, doujans an dud evitan a greske bemdez.

Eun devez e pareaz mab roue ar Skoss en eur deuler dour benniget varnezan; ar vedisined o doa lavaret: « Louzou an apotikerez ne c'hellont ober vad ebet » d'ezan, kollet eo. » Eur vech all e roaz ar pare d'eur baotrez ganet mut. Kas a rea dalc'h-mad an drouk-spered euz korfou an dud keiz a gave var he hent.

Sant Bernard, p'en deuz skrivet buez ar zant-man, a lavar d'eomp ouspenn, e lakeaz, eun devez, da zistrei d'ar vuez eur vaouez marvet hep sakramant an Nouen.


An eskop santel en eur vont da Roum a dremenaz dre abati Clairvaux, el leac'h ma oa sant Bernard; goude beza choumet eno pevar devez e koumpagnunez ar venec'h, e kouezaz klanv; reseo a reaz he zakramanchou diveza gant eun devosion vraz, hag e varvaz etre daouarn ar relijiuzet glac'haret; ar joa a bare var he dal a ziskoueze ar fizians vraz en devoa e Doue (1148).

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man a zo bet hed he vuez pur, humbl ha devot. Biskoaz n'en deuz karet henoriou ha plijadureziou ar bed, na c'hoantea nemet eun dra, plijout bemdez muioc'h da Zoue dre eur vuez santeloc'h. Setu aze ar peb a dleer ober evit beza devot e guirionez. Ar re n'int ket devot nemet var draou a zo, deveziou a zo, a zo rannet ho c'haloun etre Doue hag ar bed, ar re-ze oll ne reont nemet ober an neuz da veza devot, ne velont ket ket guir stad ho ene, koza a reont en ho dizurziou, dre ma vougont rebechou ho c'houstians.

AN UNAN VAR 'N UGENT DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Thomas, Abostol



Thomas a oa ginidik euz ar Galilee. O veza klevet hano euz a viraklou Jesus, ez eaz d'he heul; hag o veza m'oa braz he feiz ha birvidik he garantez, Hor Zalver hel lakeaz e renk he ebetel.

Eun dra a verko d'eomp peger stard e oa he garantez evit Jesus. Eun devez m'oat eat da lavaret d'Hor Zaver: « Aotrou, ho mignoun Lazar a zo klanv », Jesus a lavaraz: « Deomp d'he velet. » An ebestel a zavaz aon ganto: « Mestr, emezo, ar Juzevien a glask ho lakât d'ar maro, ha c'houi a 'z a en ho zouez ! » Thomas, e leac'h sevel gant ar re all, a lavaraz: « Deomp, ni ive, » ha marvomp gant hor mestr. »

D'ar iaou gampr-lid, goude ar goan ziveza great gant he ebestel, Jesus a ziskleriaz d'ezo: « Mont a ran da » ober d'eoc'h eur plas: gouzout a rit da be leac'h ez » an, hag anaout a rit an hent. » Thomas a lavaraz kerkent: « Mestr, ne ouzomp ket da be leac'h ez it, pe » naoz eta e c'helfemp anaout an hent? » Jesus a roaz d'ezan ar respount kaer-man: « Me eo an hent, ar virio- » nez hag ar vuez. »

D'ar zul Fask, pa oa nevez savet euz a varo da veo, Jesus en em ziskouezaz d'he ziskibien: « Ar peoc'h ra » vëza ganeoc'h, emezan ». Hag e reaz d'ezo anzañ e oa resusitet e guirionez: Thomas n'edo ket neuze gant an dek all.

Pa deuz an abostol, ar re all a lavaraz: « Ni on euz » guelel ar Mestr. » Hen a respountaz: « N'ho kredin » nemet goude m'am bezo lakeat va biz e toull an » tachou, ha va dourn e gouli he gostez. »

Eiz devez goude, an ebestel a oa adarre asamblez er memes leac'h, pa deuz Jesus dirazo, hag e lavaraz da Dhomas: « Lakit ho piz ama, ha sellit ouz va daouarn; » lakit ive ho tourn e gouli va c'hostez, ha kredit » breman. » Ar zant a gouezaz kerkent d'an daoulin, en eur lavaret: « O va mestr ha va Doue ! » — Thomas, » eme Jesus d'ezan, kredet oc'h euz, abalamour m'oc'h » euz guelel; cüruz ar re n'o deuz ket guelel, hag o » deuz kredet ! »

Goude ar Pantekost, p'en doa resevet ar Spere-d-Santel, asamblez gant an ebestel all, sant Thomas en em lakeaz da brezeg aviel Jesus-Krist, e kear Jerusalem. Evit-se en devoue a bep seurt dismegans da c'houzanv, a-berz pennou-braz ar Jusevien.

Divezatoc'h, p'en em zispartiaz an Ebestel evit mont da gas sklerijen ar feiz, dre ar bed oll, sant Thomas a ieaz e kostez ar Zao-Heol. Bez' en devoue, var a gounter, an heur vad da velet, er vro-ze, an tri roue a oa deut da adori ar Mabik Jesus, pa oa nevez-ganet, e kraou Bethleem. Goude m'en devoue ho c'helennet var guirioneziou ar relijion gristen, sant Thomas a roaz d'ezo ar vadiziant.

Heb damant d'ar boan, sant Thomas a brezegaz, dre bevar c'horn an Asi. En Indez, dreist oll, e c'hounezaz eur maread eneoù da Jesus-Christ. Sevel a reaz eno kalz ilizou, hag e sakraz eskibien ha beleien evit kendel-c'her, er vro-ze, labour silvidigez an dud.

Jesus en doa lavaret, meur a vech, da zant Thomas, koulz ha d'an Ebestel all: « C'houi a vo goall-gaset, » abalamour d'in-me ». Hag, evit guir, o velet e c'houneze an Abostol santel kement a eneoù da Zoue, ha ne joume ganto koulz lavaret den, beleien an idolou en em glevaz etrezo evit he laza.

Eun devez m'edo sant Thomas, e kear Kalamin, o pedi dirak eur groaz en doa savet he-unan, var eur menez huel, unan euz beleien an idolou a roaz d'ezan eun taol lans: peurlazet e oue, goude-ze, a daoliou mein.

Kristenien ar vro a enterraz korf ar zant, en iliz.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man en doa eur garantez vraz evit Jesus. En he garantez evitan, n'en deuz espernet netra evit gounit d'ezan kals a eneoù.

C'houi ive, m'o peuz eur guir garantez evit Jesus-Krist, grit kement a zo en ho kalloud, evit ma vezo servichet mad en dro d'eoc'h. Dre ho komzou fur, dre ho puez kristen, tadou ha mammou, deskit d'ho pugale karet Hor Zaver hag he lezen. C'houi ive, mistri ha mestrezed, grit kristenien vad euz ar re a zo dindannoc'h. Oll, braz ha bian, mistri ha servicherien, pedit evit distro ar bec'herien divar an hent fall: evel-se e tiskouezoc'h da Jesus-Christ oc'h euz guir garantez evitan.

AN EIL DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

An den eürus Konrad, Manac'h

(1241-1306)

Ganet en Itali, er bloaz 1241, Konrad a oue savet mad gant he dud; desket a oue d'ezan abred karet Doue. D'he bemzek vloaz, e c'hoanteaz mont e Trede Urz Sant Fransez; resevet e oue, hag er gouent ar manac'h iaouank a oue skouer ar venec'h all, dre he humilite.

O velet he spered lem, he zuperior a reaz d'ezan studia an theologi; dont a reaz buan da veza desket braz, hag eur vech ehu he studi gantan, e oue beleget. Kement a c'hoant en doa da ren eur vuez kuzet, ma c'houlennaz beza karget euz labouriou ar gegin er gouent, ha mont bep en amzer da gestal evit he Genvreudeur. Roet e oue d'ezan he c'houlenn, hag e tremenaz evelse pemzek vloaz el labourou dister-ze.

He humilite a oa ker braz ma ehanaz da lavaret he oferen bemdez, o sonjal ne oa ket din aouale'h euz ar c'hras kaer-ze. Eul leanez devot, sklerijennet gant Doue, a deuz neuze da gaout ar zant, hag a lavaraz d'ezan: « Ne rit ket mad o choum heb oferenma, me a zo » o paouez gullet var an aoter Hor Zalver Jesus-Christ » a oa oc'h ho kervel hag ho kortoz; he dal a oa terval » abalamour na dosteac'h ket, arabat eo d'eoc'h beza » ken aounik, it da Jesus gant muioc'h a fizians. »

Evit guir, ar zant n'en doa ket kredet tostât euz an aoter abalamour mar tliet, en devez-se, kana eur zervich en iliz da boent an oferennoù, hag en doa aon na vije bet distranset divar he oferen, ha n'en dije ket gellet he lavaret gant devosion aouale'h.

Ar vrud euz he zantelez a reaz d'he zuperior kas

Konrad da gouent ar menez Alvern, el leac'h m'oa bet dija sent braz, anavezet mad dre ho burzudou: sant Fransez a Assis, sant Bonavantur, sant Anton a Badou ha re all c'hoaz. Er gouent-se, Konrad a dremene he oll amzer o sonjal e traou an env; ar Verc'hez Vari, elez ha sent euz ar baradoz en em ziskouezaz d'ezan meur a vech; alies a hini a velaz a oue ar **Frer Jiles**, a oa bet var an douar mignoun ha koumpagnoun sant Fransez.

An dud divar dro a zirede evit gullet ar manac'h santel.

Konrad, dre humilite atao, a jenchaz kouent neuze, ha kenta tra a reaz en eur erruout en he gouent nevez, a oue para dre vuzud eur vaouez euz a gichen eat an diaoul en he c'horf. O velet an dud o tont d'he gaout adarre, e tistroaz d'he gouent kenta evit miret ne vije re anavezet gant an oll. Er gouent-man, ar Verc'hez Vari en em ziskouezaz d'he zervicher gant ar Mabik Jesus var he breac'h, hag unan euz ar venec'h, test euz ar burzud-man, a velaz anezi o rei he mab da boket d'ar zant.

Konrad a oue karget da brezeg tro var dro ar gouent. He brezegennou a zougaz kalz a frouez, abalamour ma rea burzudou, ha ma tisklerie aliez an amzer da zont.

Heulia a reaz penn-da-benn ha ker mad reolen a vuez Urz sant Fransez, ma oue hanvet gant an oll eun eil sant Fransez. Karet a rea kement ar baourentez hag an humilite, ma tougaz, epad ouspenn hanter kant vloaz, ar memes guiskamant leun a doullou hag a dammou; atao e kerze diare'hen, he zaoulagad troet varzu an douar.

A greiz ma oa o prezeg eur mision e Bastia, eur gear vian tost da Assis, e varvaz e peoc'h, e miz kerzu euz ar bloaz 1306. Ar Pab Pi VII, er bloaz 1817, en deuz roet aotre da renta henorioù an Iliz d'an Den eürus Konrad.

SONJOMP ERVAD :

Na pegen dishenvel eo sonjezounou ar zent diouz sonjezounou an dud! An den santel-man a glaske al labourou

distera euz ar gouent evit beza disprijet: ni ne glaskomp nemet beza henoret, meulet. Mont a reaz d'eur gouent all, ober a rea miraklou, ha kerkent an dud a ziskouezaz respet d'ezan; hen neuze a dec'haz en eur plas all: eno ne vije ket anavezet, ne vije ket great a stad anezan. Aon en deuz bet atao da veza fougeat gant an dud, rak gouzout a rea e vezimp barnet gant Doue, n'eo ket gant an dud eo. Ni, er c'hontrol, a glask meuleudi an dud, ha ne zonzomp nemeur e Doue; mall eo d'eomp chench buez, ha karet an humilite a zo dor an oll vertuziou all, ha dor ar baradoz.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

SANT SERVUL

Ar zant-ma, hervez ma lavar sant Gregor Pap, a oa eur paour o choum eharz dor iliz Sant-Klemant, e Roum; eno e reseve an aluzen digant an dud vad a iea en iliz. Ouspen he baourentez, e oa e'hoaz dalc'het gant eur c'hlenved hag en devoa seizet d'ezan he oll izili, ha lakeat anezan en eur stad ken truezuz, ma na c'helle ket en em drei he-unan, na memez sevel he zourn d'he c'hinou. E kreiz he boan hag he drubuillou, ne ehane da zonzjal bepred e Doue; renta a rea dalc'had meuleudi ha trugarez d'he Grouer, abalamour ma oa bet lakeat gantan er stad-se.

He vuez devot ha santel a rea da galz a dud diredet d'he zikour ha souplât evelse he boaniou; met Servul ne zalc'he euz a gement a roet d'ezan nemet ar pezh a oa red evit miret he vuez hebken; ranna a rea an nemo-rant etre ar beorien all; dioueret a rea memez kalz a draou hag o divije great vad d'ezan en eur stad ken truezuz.

Ne ouie ket lenn, met ober a reaz prena d'ezan leo-

riou ar Skritur Sakr, ha pa deue relijiuzet d'he velet, e rea d'ezho lenn d'ezhan eur gomz santel benag.

Seul-vui ma teue he gorf da uza ha da zemplât gant ar c'hlenved, seul-vui e kreske he zoursi da grenvât he ene dre ar beden; ha Doue, epad an amzer-ze, a skuille en he galoun bep seurt laouenedigez, en eun hevelep doare ma c'helle lavaret evel ar prophet David: « Seul-vui ez eo braz va foaniou, seul-vui, o va Doue, o peuz » laoueneat ha krenveat va ene! »

Evel ma kare Doue dreist pep tra, ee'h en em blijie kement o klevet komz anezan, ma pede atao an dud vad hag an dud santel a dremene dirazan, da lavaret d'ezan eur ger mad benag divar-benn Doue.

Pa oa prest da vervel, ee'h en em gavaz kalz tud en dro d'ezan, hag evel ma reant trouz, ar zant ho fedaz da jom sioul: « Peoc'h, peoc'h, emezan, ne glevit-hu » ket eur c'han kaer ha dudiuzeurbed ? » Hag epad ma oa he zaoulagad o para varzu an env, ha ma selaoue an elez o kana, e rentaz he ene da Zoue.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar c'hlenved, p'her gouzanver evit Doue, a zervich evit brasa mad an ene. Grit d'in gouzanv bep seurt klenvejou, o va Doue, kement ha ma fell d'eoc'h! Met plijet ganeoc'h er memez amzer skuill ho krasou var va ene.

II. — Ar baourentez a rank plijout d'an elez ha da Zoue, pa 'z eo bet ar paour-man, var he varo, konolet gant kanaouen an elez. Doue a ro plijadureziou d'ar re binvidik en ho buez ha glac'har en ho maro; d'ar re baour, er c'hontrol, e tigas daelou epad ho buez, met ar joüsdet peurvuia a zo ouz ho gortoz en heur euz ho maro.

III. — Ar baourentez hag eur c'hlenved hir o deuz great da Zervul gouzanv kalz poan, goulskoude na oue biskoaz klevet o klem, ha goulen a rea memez gouzanv muioc'h c'hoaz a boaniou; guelit ha c'houi o pije great kement all, o pije bet kement a basianted hag hen.

Servul a oa bepred ken laouen, ma velet o para var he vizach ar sked euz ar joa a oa en he galoun. Petra oa pennkaoz a gement-se? He galoun a veze atao da Zoue el leac'h beza da draou ar bed. Evelse kement poan a c'helfac'h da

distera euz ar gouent evit beza disprijet: ni ne glaskomp nemet beza henoret, meulet. Mont a reaz d'eur gouent all, ober a rea miraklou, ha kerkent an dud a ziskouezaz respet d'ezan; hen neuze a dec'haz en eur plas all: eno ne vije ket anavezet, ne vije ket great a stad anezan. Aon en deuz bet atao da veza fougeat gant an dud, rak gouzout a rea e vezimp barnet gant Doue, n'eo ket gant an dud eo. Ni, er c'hontrol, a glask meuleudi an dud, ha ne zonzomp nemeur e Doue; mall eo d'eomp chench buez, ha karet an humilite a zo dor an oll vertuziou all, ha dor ar baradoz.

AN TREDE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

SANT SERVUL

Ar zant-ma, hervez ma lavar sant Gregor Pap, a oa eur paour o choum eharz dor iliz Sant-Klemant, e Roum; eno e reseve an aluzen digant an dud vad a iea en iliz. Ouspen he baourentez, e oa c'hoaz dalc'het gant eur c'hlenved hag en devoa seizet d'ezan he oll izili, ha lakeat anezan en eur stad ken truezuz, ma na c'helle ket en em drei he-uman, na memez sevel he zourn d'he c'hinou. E kreiz he boan hag he drubuillou, ne ehane da zonzjal bepred e Doue; renta a rea dalc'had meuleudi ha trugarez d'he Grouer, abalamour ma oa bet lakeat gantan er stad-se.

He vuez devot ha santel a rea da galz a dud diredet d'he zikour ha souplât evelse he boaniou; met Servul ne zalc'he euz a gement a roet d'ezan nemet ar pezh a oa red evit miret he vuez hebken; ranna a rea an nemorant etre ar beorien all; dioueret a rea memez kalz a draou hag o divije great vad d'ezan en eur stad ken truezuz.

Ne ouie ket lenn, met ober a reaz prena d'ezan leo-

riou ar Skritur Sakr, ha pa deue relijiuzet d'he velet, e rea d'ezho lenn d'ezhan eur gomz santel benag.

Seul-vui ma tene he gorf da uza ha da zemplât gant ar c'hlenved, seul-vui e kreske he zoursi da grenvât he ene dre ar beden; ha Doue, epad an amzer-ze, a skuille en he galoun bep seurt laouenedigez, en eun hevelep doare ma c'helle lavaret evel ar prophet David: « Seul- » vui ez eo braz va foaniou, seul-vui, o va Doue, o peuz » laoueneat ha krenveat va ene! »

Evel ma kare Doue dreist pep tra, ee'h en em blijve kement o klevet komz anezan, ma pede atao an dud vad hag an dud santel a dremene dirazan, da lavaret d'ezan eur ger mad benag divar-benn Doue.

Pa oa prest da vervel, ee'h en em gavaz kalz tud en dro d'ezan, hag evel ma reant trouz, ar zant ho fedaz da joun sioul: « Peoc'h, peoc'h, emezan, ne glevit-hu » ket eur c'han kaer ha dudiuiz meurbed ? » Hag epad ma oa he zaoulagad o para varzu an env, ha ma selaoue an elez o kana, e rentaz he ene da Zoue.

SONJOMP ERVAD :

I. — Ar c'hlenved, p'her gouzanver evit Doue, a zervich evit brasa mad an ene. Grit d'in gouzanv bep seurt klenvejou, o va Doue, kement ha ma fell d'eo'h! Met plijet ganeoc'h er memez amzer skuill ho krasou var va ene.

II. — Ar baourentez a rank plijout d'an elez ha da Zoue, pa 'z eo bet ar paour-man, var he varo, konolet gant kanaouen an elez. Doue a ro plijadureziou d'ar re binvidik en ho buez ha glac'har en ho maro; d'ar re baour, er c'hontrol, e tigas daelou epad ho buez, met ar joäsdet peurvuia a zo ouz ho gortoz en heur euz ho maro.

III. — Ar baourentez hag eur c'hlenved hir o deuz great da Zervul gouzanv kalz poan, goulskoude na oue biskoaz klevet o klem, ha goulen a rea memez gouzanv muioc'h c'hoaz a boaniou; guelit ha c'houi o pije great kement all, o pije bet kement a basianted hag hen.

Servul a oa bepred ken laouen, ma velet o para var he vizach ar sked euz ar joa a oa en he galoun. Petra oa pennkaoz a gement-se? He galoun a veze atao da Zoue el leac'h beza da draou ar bed. Evelse kement poan a c'helfac'h da

gaout a deufe da veza dous hag eaz da c'houzanv mar kirit kinnig ar boan-ze da Zoue en eur c'hervel anezan d'ho kenerza, hag en eur zonzal e tigollo Doue ac'hanoc'h eun deiz, er bed all. Ha ne deo ket guir ez oc'h aliez ankeniet ha kazi trec'het gant an anken? Petra zo kaoz a gement-se? Ne zonzit nemeur e Doue; hen goulskoude, hag hen hebken a c'hell ho konsoli.

Ar zent, e kreiz ho brasa poaniou, o deuz klasket ho c'honsolasion er beden; he c'havet o deuz eno atao.



AR PEVARE DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

Sant Iañ Diskalseat

(1280-1349)

Iañ Diskalseat, anavezet mad hag henoret en iliz katedral Kemper dindan an hano a **Zantik Du**, a zo ganet, var a leverer, e parrez Sant-Vouga, var dro ar bloaz 1280.

He dud a oa paour, hag hen, evit gounit he voued, a labouraz en he iaouankiz gant eur c'hender d'ezan, den a vicher.

Pa oue savet da baotr iaouank, Iañ a gavaz e oa diez d'ezan ober he zilvidigez er bed, mont a reaz da Roazon evit studia: beleget e oue. He vuez, epad he studi, a oue kalet meurbet, iun a rea tri devez er zizun divar bara ha dour, hag ober a rea kalz pinijennou all.

Eskop Roazon, o velet peger santel e oa ar beleg iaouank, hen hanvaz persoun e parrez Sant-Gregor, demdost da Roazon; Iañ a lavaraz nan da genta, met var urz an eskop, ez eaz da ren ar barrez.

Meulet e oue buan gant he dud, rak mad e oa evit ar paour, ha santel en he vuez: bale a rea atao divoutou. A benn eun nebeut bloaveziou, ar zant a roaz an dilez

euz he garg evit mont da vanac'h en Urz sant Fransez: resevet e oue gant levezet er gouent o doa ar venee'h e kreiz kear Kemper. Ar manac'h nevez a heuliaz penn-da-benn ar reolen, met an dra-ze ne oa ket aouale'h evitan: ober a rea kalz pinijennou ha ne oa hano ebet anezo e reolen an Urz. Nemet klanv e vije, ne zebre ket a gig ha ne eve ket a vin; ken nebeut a voued a zebre m'en doa poan o choum en he za; he voued a veze atao gros ha dister.

Ober a rea eiz koraiz er bloaz, en eur iun divar bara ha dour hed an oll amzer-ze koulz lavaret: ar c'henta a zigore antronoz gouel ar Rouaned, an eil a oa koraiz an oll gristenien, mont a rea betek ar zul Fask; an trede a rea araok gouel ar Pentekost; ar pevare a zigore daou-ugent devez araok gouel braz an ebistel sant Per ha sant Paol. A veac'h m'en deze achu ar iun-ze, ma tigure ar iun en honor d'an Itroun-Varia, da echui da c'houel Hanter-eost; ar c'houec'hved en honor d'an elez santel, a iea betek gouel sant Mikeal; ar zeizved a bade betek gouel an oll Zent; en eizved ha diveza koraiz, a veze great hed an azvent. Pa zonzjer ez euz daou-ugent devez en eur c'horaz, e veler ervad e rea ar zant koraiz hed ar bloaz, koulz lavaret; ne joume gantan d'en em gennerza, nemet amzer eur c'horaz all.

An diaoul, drouk ennan o velet ar vuez pinijennuz a rene ar zant, a glaskaz rei d'ezan da gredi e vije daonet met sant Iañ a respountaz d'an diaoul: « Fizians am euz » e Doue, ne vezin ket kollet da viken. » An diaoul her guall gasaz neuze, hag a skoaz memez ganthan; met ne reaz ket da Iañ Diskalseat koll kaloun.

Doue a reaz d'ezan ober miraklou braz, e kenver tud klanv hag ezomek, ha diskleria meur a dro an amzer da zont.

Meur a viz araok ar c'hlenved tomm, er bloaz 1349, ar zant a lavaraz e tigouesfe dizale rann-galoun vraz var gear, hag e guirionez ar vosen a skoaz Kemper, hag a reaz mervel kalz a gristenien. An Tad, dre druez ouz an dud keiz, a rede heb ehan, euz an eil rum tud klanv d'egile, met he garantez a reaz d'ezan peurgloza buan

he gurunen er baradoz: taget e oue ive gant ar c'hlenved speguz-se.

Mervel a reaz goude beza resevet sakramanchou an Iliz, hag he gorf a oue enterret e chapel ar gouent.

Abalamour m'eo bet henoret a bep amzer Ian Diskalseat pe Ian Divoutou, evel sant, gant kristenien eskopti Kemper, ez euz goulemmet digant Hon Tad Santel ar Pab, diskleria ez euz guir da renta d'ezan an oll henoriou dleet d'ar zent.

Sant Ian Diskalseat a vez pedet gant ar re dreist oll o deus kollet eun dra benag.

SONJOMP ERVAD :

Sant Ian Diskalseat na eve berad guin ebet. Ar guin, pa ves kemeret gant ar pred, a zikour maga an den, hag a c'hell ober vad d'ezhan. Eva guin, etre ar prejou, a ra drouk peurliesia, ha seul aliesoc'h e vez evet guin pe alkool, seul vui a zrouk a ra. Euz a be leac'h e teu ouspenn an hanter euz an dud galvet dirak ar justis evit eur mestaol pa eun torfet benag? Euz an davarn. Pe seurt zo kaoz ma ves ken leun an hospitaliou a dud hag o deuz kollet ho fenn? Ar banneou, peurliesia krenv. Torrit eta ar pleg fall a zo ker stank siouas! etouez an dud, ar pleg da eva eur banne hag avechou meur a hini, ken alies guech ha m'en em veler. Ar banneou a goll ar yec'hed, an danvez, ar ouen, a goll ar vro a bez.

Goasa zo er banneou: ober a reont koll ar baradoz. Nak a bed kant mill den a zo o iudal hag o vlashemi en ifern, devet gant eur zec'hed spountus, hag a zo daonet abalamour d'ar hoessoun!



AR PEMPED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

GINIVELEZ HOR ZALVER JESUS-CHRIST

Pe Gouel Nedelek



Setu ama komzou an Iliz, pa embann bep bloaz, ar gouel-man: « Er bloaz pemp mil naontek ha nao-ugent, » abaoue krouidigez ar bed; er bloaz daou vil nao » c'hant seiz hag hanter-kant, abaoue an dour-beuz en » amzer Noe; er bloaz daou vil penzek, abaoue ma oa » ganet Abraham; er bloaz mil pemp kant dek, abaoue » m'en doa Moyzez tennet pobl Israel euz sklavaeh an » Ejipt; er bloaz mil daou ha tregont, abaoue ma oa » bet David sakret roue; Jesus-Christ, Doue a oll-vis- » koaz ha mab an Tad Eternel, o fallout d'ezan santellât

» ar bed dre he zonedigez santel, a zo ganet evel den
» euz ar Vere'hez gloriuz Vari, e Bethleem, kear Juda. »

Hervez an Aviel hirio, an impalaer Aogust a felle
d'eza gouzout ped den a oa en he rouantelez. Goure'he-
men a reaz eta d'he oll zujidi, ken goazed, ken mer-
c'hed, skriva ho hano var ar rollou a vije digoret, evit-
se, en oll geariou; da zonzjal kaout muioc'h a urz en
traou-ze, pep hini a ranke lakât he hano, n'eo ket el
leac'h m'oa o choum he-uman, met el leac'h m'oa ganet
he dud koz.

Evit senti ouz al lezen-ze, daou bried santel, anavezet
nebeut gant an dud, ho hano Joseph ha Mari, a rankaz
mont euz a Nazareth da Vethleem, rak eno, e oa bet ho
zud koz o choum. Ar veach a oue hir ha poaniuz evito:
diou leo ha tregont o doa da ober a-dreuz ar menezioù,
ha dre guenodennou digompez.

Abenn pevar devez bale, an daou bried a zigouezaz
e kear Bethleem, dioc'h an abardaez, skuiz aoualc'h.
Ne gavjont plas ebet en tiez, leun e oant; setu ma oue
red d'ezo mont da glask ar goudor en eur c'havarn hag
a zerviche da graou d'al loaned. Dister e oa, ien e tlie
beza ive p'eo guir e oa hanter-dizolo; n'euz fors, guel-
loc'h e oa c'hoaz eget choum er meaz. Joseph ha Mari
a ieaz ebarz, hag eno, er c'hraou dirapar-ze, d'an taol a
hanter-noz, var eun dornadik kolo, e tenaz ar bed, an
Hini ma oa an dud oll var c'hed anezan, ar Zalver pro-
mettet da Adam hag Eva, e baradoz an douar.

Oh! pegen eüruz e oue neuze Mari ha Joseph, pa
veljont dirazo mab Doue, en em c'hreat den, en em
c'hreat krouadur bian! O pokat d'he zaouarn, o pokat
d'he dreid, o starda ar Mabik Jesus var boull ho c'ha-
loun, Mari ha Joseph ne zonzjent mui nag en ho skuisder,
nag en ho foaniou.

En noz ma oue ganet Jesus, eme c'hoaz an Aviel, tost
d'he graouik benniget, e oa pastored o tiouall ho loaned,
e giz ma reer c'hoaz hirio, er vro-ze. Hag e kreiz tenva-
lijen an noz, setu en eun taol, eur sklerijen lügemuz o
para en dro d'ezo, hag eun eal oc'h en em ziskouez di-
rak ho daoulagad. Ar bastored keiz a oue nec'het:

« Arabat d'eoc'h kaout aoun, a lavaraz d'ezo an eal gant
» dousder, eur c'helou a joa eo a zigasan d'eoc'h. Eur
» Zalver a zo ganet d'eoc'h, e kear Bethleem, ha setu
» ama penaoz e c'helloc'h he anaout: kaout a reoc'h eur
» c'hrouadurik mailluret ha gourvezet en eur c'hraou. »

Kerkent ive ar bastored a glevaz a zioc'h ho fenn eur
maread elez all hag a gane dudiuz ar c'homzou-man:
« Gloar da Zoue, e barr an envou, ha peoc'h, var an
» douar, d'an dud a volentez vad! **Gloria in excelsis**
» **Deo, et in terra pax hominibus bonæ voluntatis.** »

Ar bastored a lavaraz neuze, an eil d'egile: « Deomp,
» emezo, deomp da Vethleem, da velet petra zo en em
» gavet, eno, a nevez. » Hag hint-hi en hent, ha divar
herr. Hag e guirionez, erruet e kraouik Bethleem, e
kavjont eno, evel m'en doa lavaret an eal, Mari ha Jo-
seph ha ganto ar Mabik Jesus astennet var eur guchen-
nik kolo. Var bennou ho daoulin, ho fenn liarp ouz an
douar, er meaz anezo ho-unan gant al levenez, ar bas-
tored a adoraz ar Mabik Jesus. Goude beza he bedet, ar
bastored a zistroaz d'ar gear, karget a c'hrasou, hag ar
peoc'h en ho c'houstians, en eur veuli hag en eur dru-
garekât an Aotrou Doue.

SONJOMP ERVAD :

Perag eo ganet Hor Zalver Jesus-Christ, hen Mab Doue,
hen an Oll C'halloudek, hen krouer an env hag an douar,
en eur baourentez ker braz? Evit rei da entent ne deue ket,
er bed-man, evit he blijadur; evit rei da entent ne deue, var
an douar-man, nemet evit rapari pec'hed hon tad kenta,
Jesus a zo ganet paour, e kraouik Bethleem, evit deski d'eomp
gouzanv gant pasianted poaniou ar vuez-man.

Poan o peuz gant ho labour, c'houi tud divar ar meaz,
c'houi micherourien: sonjit er garantez en deuz Jesus evi-
doc'h. P'oc'h euz poan, eo ez oc'h henvella outan.

Pa lennit an Aviel hirio, oc'h euz marteze avi ouz ar bas-
tored, abalamour m'in bet ken tost da Vab Doue. Arabat
eo d'eomp ho avia kement-se, rak en eun doare ni a zo
eürusoc'h evito. Test d'eomp ema Jesus, p'eo guir en deuz
ar vadelez da joum ganeomp, noz-deiz, en tabernakl, e Sa-

kramant an Aoter. N'eo ket eur vech hebken evel ar bastored e c'hellomp tostât outan, met bemdez: deuit eta davetan, aliez, dre ar gommunion zantel.

AR C'HOUEC'HVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

Sant Stephan, kenta Merzer

Ar zant-man, desket braz var ar c'henteliou a gave ar Juzevien en Testamant koz, a zelaouaz abred kelennadurez Jesus, hag a anavezaz e oa hen ar Messias m'oa an dud var c'hed anezan.

Ar gristenien genta, dre garantez evit ho breudeur, a roe kalz arc'hant d'an ebestel: ar re-man a dlie ingala an aluzennoù-ze etre an dud ezomek. Dre ma kreske bemdez niver ar gristenien, an ebestel a lavaraz eun devez d'an oll: « Hor breudeur ker, ni on euz aoualc'h » d'ober gant hor pedennoù hag hor prezegennoù, re a » amzer a gasomp oc'h ingala aluzennoù etre ar re » baour, choazit eta seiz den euz ho touez, seiz den leun » a furnez hag a zoujans Doue: int-hi a ingalo an aluzennoù etre ar re baour. »

Ar gristenien, sentuz atao, a zibabaz seiz den, hag a oue lakeat dirak an ebestel: ar re-man a astennaz ho daouarn varno, hag ho greaz avielerien. Stephan a oue unan euz ar seiz-se, hanvet eo da genta er Skritur Zakr.

Eur vech Avieler, Stephan a zikouraz entent ouz ar beorien; ouspenn-ze, prezeg a rea e oa deut ar Messiaz, Jesus a Nazareth. O veza ma rea ar zant miraklou, meur a hini euz ar Juzevien a droe gant ar relijion gristen.

Ar pennoù braz hag ar fals-doktored a egaraz o velet al labour a rea Stephan, hag a glaskaz lakât anezan gaouiad. Met ar zant, sklerijennet gant ar Spered-San-

tel, a oue eaz treac'h d'ezo en he respouchou leun a furnez.

Neuze, er zont dont a-benn anezan, fals-doktored ar Juzevien a genteliaz testou faoz, hag hen tamallaz da veza blasfemet eneb lezen Moizez, hag eneb an Aotrou Doue. Setu eta Stephan kaset evit-se dirak lezvarn Jerusalem.

An avieler santel, evit sklerijenna an dud keiz-se, a zigasaz da zont d'ezo euz an oll grasou o doa bet digant an Aotrou Doue, met rebech a reaz d'ezo, ez memez amzer, ho zorfed, p'o doa lakeat d'ar maro Jesus, ar Zalver benniget.

Epad ma komze Stephan, ar re oll a oa eno a gave d'ezo gullet eun eal dirazo. Evelato komzou ar zant a lakea goad ar fals-doktored da virvi en ho goazied. Skri-gna a rea ho dent gant ar goumar a oa en ho c'haloun.

Etretant, an env a zigoraz. Evit kennerza sant Stephan, Doue an Tad en em ziskouezaz d'ezan, en he c'hloar; a zeou d'ezan he Vab Jesus. Neuze, he zaoulagad savet etrezek an env, an avieler santel a lavaraz: « Gullet a ran an env digor, ha Mab-Doue a zeou d'he » Dad oll-c'halloudek. »

O klevet kement-se, fals-doktored ar Juzevien hag ho zud a stankaz ho dioukouarn gant ho bizied, hag a griaz a bouez-penn: « Blasphemet en deuz ! » Ker buan ar vandennad tud milliget-se a zaillaz var ar zant, hag her c'hasaz er meaz euz kear.

An testou o doa tamallet an avieler e gaou, a verzeriaz anezan a daoliou mein, goude beza roet ho dillad da ziouall d'eun den iaouank hanvet Saol.

Epad m'edo an dud kriz-se o teuler mein outan, ar zant a bede hag a lavare: « Jesus, va Mestr ha va Zalver, » digemerit va ene. » Eun nebeut goude, en despet d'he boaniou, ec'h en em lakeaz var bennou he zaoulin, hag e lavaraz a vouez huel: « Va Doue, pardounit d'am » bourrevien. » Hag e tremenaz kerkent.

He gorf a oue sebeliet dre urz Gamaliel, evel m'eo merket d'an 3 a viz eost.

SONJOMP ERVAD :

Fals-doktored ar Iuzevien a gave d'ezo o devije mouget religion Jesus-Christ, o laza sant Stephan. Ar c'hontrol eo: goude he verzerenti, niver ar gristenien a greskas muioc'h-mui. An den iaouank, Saol he hano, a zioualle dillad ar vourrevien, a deuaz, nebeut goude, da veza an Abostol braz sant Paol, gant sikour ar grasou en doa roet Doue d'ezan, abalamour da bardoun ha da beden ar Merzer. Setu perak, eun doktor brudet euz an amzer goz a lavare: « Goad mer- » zerien, had kristenien. »



AR ZEIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

Sant Ian, Aviel



Ar zant-man a zo ganet e Bethsaida, er Galilee; pesketaer e oa: pa deuaz Jesus da brezeg he Aviel, Ian a oue unan euz ar re genta o selaou he genteliou.

Hor Zalver a gare Ian, dreist he oll Ebestel all, abalamour ma oa bet atao pur ha chast, en he vugaleach hag en he iaouankiz. Jesus a ziskouezaz ar garantez-se meur a vech, met ispisial d'ar iaou gampr-lid.

Da genver an devez-ze pa zavaz Jesus Sakramant an Aoter, sant Ian a oue da dosta d'he Galoun Zakr. Peger kaer, peger flam e oa he garantez evit he Vestr ! Setu perak, ma tec'haz evel an ebestel all, eur pennadik, deiz Pasion Hor Zalver, e teuz buan var he giz evit heuill he vestr. Ne oa nemetan euz an ebestel e kichen an Itroun-Varia, var menez Kalvar.

Var al leac'h edo, pa oue staget Jesus ouz ar groaz. Hor Zalver, araok mervel, a zigollaz he garantez evitan. O veza great eur zell ouz ar Vere'hez Vari, hag o tiskouez d'ezi sant Ian, Jesus a lavaraz: « Setu aze ho » mab ». Gonde, o veza troet he zaoulagad varzu sant Ian hag o tiskouez d'ezan an Itroun-Varia, Jesus a lavaraz: « Setu aze ho mam. »

Dre ar e'homzou-ze, guir eo, Jesus a roe d'eomp oll an Itroun-Varia evit mam; met sant Ian eo a oa karget da zoursial outhi, keit ha ma choumfe e'hoaz var an douar. Divar an heur-ze, sant Ian a gemeraz an Itroun-Varia en he di, hag a ententaz outi.

Sant Ian a joumaz var ar C'halvar ken a oue diskenet korf Jesus divar ar groaz: guelet a reaz efa ar zoudard o treuzi gant he lans kostez Jesus; guelet a reaz, var an taol, goad hag eun nebeud dour o tiredet euz he Galoun Zakr: rentet en deuz testeni euz a gement-se.

D'ar zul Fask, o veza klevet gant Mari Madalen n'edo mui korf Jesus er bez, Per ha Ian a redaz dioc'htu da velet ha guir e oa: kaout a rejont ar bez goullo, e guirionez.

Gonde ar Pantekost, sant Ian a joumaz e kear Jerusalem, evit dele'her koumpagnunez d'an Itroun-Varia a oa bet fiziet ennan gant Jesus. Rei a reaz d'ezi ar gommunion zantel, bemdez en he oferen. Mont a reaz ive aliez, asamblez ganti, etrezek ar C'halvar, en eur ober Hent ar Groaz, en eur gerzet dre al leac'hiau a oa bet ruziet gant goad Jesus.

Gant an dra-ze, sant Ian a brezege an Aviel d'he genvroiz. Lavaret a reaz d'ezo, gant eur garantez birvidik: » Kement tra a zisklerian d'eoc'h divar-benn Jesus, am » euz guelet, me va-unan gant va daoulagad. Test oun » bet euz he vuez, euz he viraklou, euz he Bassion, euz » he varo var ar groaz: her guelet am euz savet euz a » varo da veo, hag o pignat en env. »

A greiz he labourou santel, soudarded an impalaer paian Domisian a grogaz en Abostol, hag her c'hasaz da Roum; eno, e oue taolet en eur gaoteriad eol bervet. Dont a reaz er meaz heb drouk ebet, ha kaset e oue da c'houde d'an enezen Pathmos, en harlu, evel m'eo merket er gouel a zo d'ar 6 a viz mae.

Pa varvaz an impalaer Domisian, sant Ian a iciaz da gear Ephes da joum. Er gear-ze e skrivaz he Aviel, evit deski d'an dud eo Jesus-Christ Doue a oll-viskoaz, krouer an env hag an douar. An abostol braz-man a skrivyaz ive liziri kaer, hag a zo er Skritur Zakr.

Var a lavarer, en he vloaveziou diveza, sant Ian ne reaz d'ar gristenien nemet atao ar memez prezegen: « Va » bugale, emezan, en em garit etrezec'h, bezit karantennien a c'houlennaz digantan perag e lavare atao ar memez tra: « Ah! a respountaz sant Ian, gourc'hemen an » Aotrou Doue eo, hag aoualc'h eo miret hennez heben. »

Sant Ian a zo bet leshanvet abostol ar garantez, abalamour d'he garantez dispar evit an Aotrou Doue, hag evit an nesa. Mervel a reaz eiz vloaz ha tri-ugent goude ma oue pignet Hor Zalver Jesus-Christ en env.

SONJOMP ERVAD :

Gonde ma oue pignet Hor Zalver en env, ar Vere'hez Vari a gommunie bemdez. Nag entanet e veze he c'haloun pa reseve he Mab!

Jesus a ra d'eomp-ni ar c'hras a reaz d'he Vam zantel: kommunia a c'hellomp bemdez evel dhi. Daoust ha mad omp da heuill skouer ar Vere'hez, ha da dostat ouz ar gommunion pa c'hellomp ? Deomp aliez da gommunia ha

goude m'hor bezo resevet Jesus kuzet en hosti zakr, choumiomp eur pennad mad a amzer, en iliz, d'he bedi, hag evidomp hon-unan, hag evit hon tud: neuze eo e vez nerzusa hor pedennou.

AN EIZVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

Gouel an Innosanted Santel

Pa oue ganet Jesus, e Bethleem, e teuz rouaned euz ar Zao-Heol da Jerusalem, hag e c'houlenjont: « E pe » leac'h, ema ar roue a zo nevez ganet d'ar Iuzevien? » rak ni or beuz guelek he stereden er Zao-Heol, hag » oump deut d'hen adori. »

Pa glevaz ar c'helou-ze, ar roue Herodes a oue spountet-braz; aon en doa da veza diskaret, ha setu hen, dioc'htu, ha goulen digant doktored al lezen e pe leac'h e tlie genel ar C'hrist. An doktored a respountas: « E » Bethleem e tlie genel; evelse eo bet diskleriet gant ar prophet. »

Neuze, nec'hetoc'h c'hoaz, Herodes a reaz he zonzj da laza ar c'hrouadur-ze, met na ziskleriaz da zen he c'hoant fallakr, pell dioc'h eno. En esper ober easoc'h he daol milliget, e c'halvaz e kuz d'he balez rouaned ar Zao-Heol hag e c'houlennaz diganto pe da vare o doa guelek ar stereden. Var ho respont, Herodes a lavaraz d'ezho: « It da Vethleem, klaskit mad ar bugel- » ze, ha pa o pezo he gavet, digasit kelou d'in, evit ma » 'z in, me ive, d'He adori. »

Rouaned ar Zao-Heol a ieaz var eün da gear Bethleem, eno e kavjont ar mabik Jesus: met pa oant o sonjal mont d'ar gear, Doue a ziskleriaz d'ezo na dlient ket mont var dro Herodes; neuze e tistrojont d'ho bro dre eun hent all.

A benn eun nebeut amzer, pa velaz ar roue Herodes na deue ket rouaned ar Zao-Heol d'he gaout, e reaz eun enklask, hag o veza gouezet e oant eat d'ho bro var eün, e savaz eur gounnar ruz ennan. Kas a reaz soudardet da Vethleem evit laza an oll vugale ac'hano ha divar dro, betek an oad a zaou vloaz. Kaout a rea d'ezan Jesus a vije sur lazet, asamblez gant ar re all. Fazia a rea.

Araok m'en doa Herodes roet an urz dinatur-ze, eun eal en em ziskouezaz da zant Joseph, dre he gousk, hag a lavaraz d'ezan: « Savit, kemerit ar bugel hag he vam, » tec'hit ganto d'an Ejipt, ha chomit eno, ken a lava- » rin d'eoc'h, rak Herodes a glasko ar bugel evit he » laza. » Sant Joseph a zentaz raktal, hag, o veza keme- » ret ar mabik Jesus ha Mari, he vam, e tec'haz ganto d'an Ejipt.

A veac'h m'oa eat kuit sant Joseph, ar Verc'hez hag ar mabik Jesus, ma tigouezaz soudardet Herodes e kear Bethleem; setu int-hi o vont, euz an eil ti d'egile, en eur laza didruez an oll vugaligou daou vloaz hag ar re a oa bianoc'h.

En eun taol-kount, ne oue klevet, dre bevar c'horn ar vro, nemet kriadennoù spountuz. Ma krie ar vugaligou geiz, ho mamou a grie guasoc'h c'hoaz.

Hervez sant Aogustin, krogad a oue, e meur a leac'h, etre ar mamou hag ar zoudardet, pa deue ar re-man da ziframma ho bugaligou euz a dre ho daouarn. « Petra ? » a lavare eur vam, kounnaret oll, pe seurt drouk en » deuz great va c'hrouadur paour? Ha pec'hed eo brema, » beva? »

» Perak, a lavare eur vam all, e teuit-hu ken didruez » da zispartia ac'hanomp an eil ouz egile? »

« Ne glaskit nemet unan, a grie mamou all, hag, » evit-se, e lazit hon oll vugale-ni! Ne deuoec'h ket » abenn da gaout an hini a ra aoun da Herodes, ho » mestr kriz, d'eoc'h-hu. »

Hag en eur vouez, an oll mamou-ze, ho c'haloun o frailla en ho c'hreiz, a zave ho daoulagad etrezek an env, hag a lavare, a dreuz ho daelou: « Deuit, Salver

» benniget, deuit buan, dre druez ouzomp ! C'houi n'o
 » peuz ket aoun rag den ebet; deuit eta dirak ar zou-
 » dardet-man evit ma chouma hor bugaligou ganeomp ! »
 Nag a e'hoad a oue skuillet, e berr amzer, e Bethleem
 hag er e'heariou all, tro var dro !

Ar vugale lazet, d'an ampoent-se, dre urz ar roue
 Herodes, a zo henoret hirio. An Iliz a laka anezo e renk
 ar verzerien, abalamour ma oue lamet ho buez diganto,
 dre gasouni ouz Hor Zalver Jesus-Christ.

SONJOMP ERVAD :

Skrija a reomp o sonjal e torfed ar roue Herodes. Mal
 goasoc'h evitan a ra an dud a skouer fall. Ar re-man, dre
 ho c'homzou hag ho oberou milliget, a lam buez an ene,
 n'eo ket buez ar c'horf eo, digant ar vugale. Setu aman kom-
 zou Hor Zalver Jesus-Christ he-unan, divarbenn ar pec'hed-
 ze: « An neb piou benag a roio skouer fall da unan euz
 » ar re vian, a ve guelloc'h d'ezan e ve staget eur mean mi-
 » lin ouz he c'houzoug, hag e ve taolet, er stad-ze, e kreiz
 » ar mor braz. »

AN NAVED DEVEZ VAR 'N UGENT A VIZ KERZU

Sant Thomas a Gantorberi, Eskop ha Merzer (1117-1170)

Ar zant-man a zo ganet e kear Londrez, e Bro-Zaoz.
 Dont a reaz er bed er bloaz 1117, d'an unan var 'n ugent
 a viz kerzu, deiz gouel sant Thomas, abostol; abala-
 mour da-ze e oue hanvet Thomas, var mean fount ar
 vadiziant.

He dad hag he vam a oa tud a zoujans Doue, hag a
 boaniaz da ober anezan eur e'hristen mad, koulz hag

eun den gouizieik. E leac'h mont er bed, e c'houlennaz
 beza resevet etouez an dud a Iliz, pa oue achu he studi
 gantan.

Roue Bro-Zaoz, Herri II, o veza klevet hano euz he
 zeskadurez, a hanvaz anezan sekretour braz rouante-
 lez Bro-Zaoz. Biskoaz Thomas ne reaz implij euz ar
 galloud a oa bet fiziet ennan gant ar roue, nemet evit
 ober vad en dro d'ezan: soursi a gemere, dreist oll, euz
 ar bobl hag euz an dud dister.

Pa varvaz arc'heskop Kantorbery, Thomas, var gou-
 len ar Roue, a oue choazet evit kaout he garg. Asanti a
 reaz en despet d'ezan, koulz lavaret.

Divar an deiz ma oue sakret arc'heskop, Thomas a
 labouraz da lakât urz vad e peb leac'h. Kreski a reaz he
 bedennou, he aluzennou hag he binijennou. Dindan he
 zillad arc'heskop, e touge eur zae reun; nebeut amzer
 a roe d'ar c'houzoug.

Prest goude, ar roue a zougaz lezennou diaoulek eneb
 ar veleien; ousspenn-ze, laerez a reaz evitan lod euz
 madou an ilizou hag ar c'houentchou. Thomas, an
 arc'heskop santel, a zavaz raktal he vouez, hag a zis-
 kleriaz d'ar roue ne zentfe biken, nag hen nag he ve-
 leien, ouz al lezennou fall en doa douget, ha ne asantfe
 biken d'he laeronsiou sakrilach.

O klevet ar c'houzoug-ze, roue Bro-Zaoz a ieaz ennan
 eur gounnar spountuz. Ar garantez en doa bet, betek
 neuze, evit ar zant, a droaz dioc'htu en eur gasouni euz
 ar re voasa.

Evit miret na vije taolet er prizoun pe gaset d'ar
 maro, Thomas a dec'haz dindan guz er Frans. Eno e oue
 digemeret mad gant ar roue Louis VII, ha gant ar Pab.
 Roue Bro-Zaoz, gant he gounnar, a reaz d'he ofiserien
 kemeret oll vadou ar zant, koulz ha madou he gerent
 hag he zervicherien; met ma oue rannet kaloun Thomas
 pa glevaz lavaret e oa goall-gaset he dud abalamour
 d'ezan, na blegaz ket evit kement-se: na e'helle ket
 mont eneb he zeve.

Roue Frans hag ar Pab a deuaz a benn, gant hir
 amzer, da derri kounnar Herri II, hag a reaz d'ezan rei

he c'her e tigemerfe, gant honor, an arc'heskop en he rouantelez, met ar peoc'h ne badaz ket pell.

Eun devez m'en doa ar zant difennet a nevez guirion an Iliz, ar Roue, tenval he benn, a lavaraz: « Pe da vare » e kavin-me unan benag evit kas an arc'heskop-se » divar va hent ! »

Er zonz ober plijadur d'ar Roue, pevar offiser a iez var eün da Gantorberi. Pa errujont, edo mare ar gousperou, ha Thomas a oa en iliz, en dro d'ezan eur maread beleien. Setu eta ar pevar offiser d'an iliz, hag o c'houlen a vouez huel: « E pelec'h ema an traitour ? » Den na respountaz grik. « E pe leac'h ema an arc'heskop ? » Thomas a deuz dioc'htu betek ar pevar offiser: « Setu me ama, emezan, me eo an arc'heskop, traitour » avad n'oun ket. »

O velet klezeier ar pevar offiser savet azioe'h he benn, Thomas a lavaraz c'hoaz: « C'hoant o peuz kaout va » buez. A galoun vad e roan anezi, evit Doue hag an » Iliz. »

Var gement-se, ar zant a iez var bennou he zaoulin, hag a giñnigaz he ene da Zoue. Neuze, heb aon ebet, ec'h astennaz he c'houzoug d'he vourrevien. Ar re-man, heb respet evit an iliz, a faoutaz he benn d'ar merzer, er bloaz 1170. Kerkent Doue a gastizaz Bro-Zaoz, hag ar roue, Herri II, a ententaz pegen heuzuz e oa an torfed en doa lakeat ober. Evit diskouez he geuz hag he c'hlae'har, e teuz diare'hen, guisket dister, da zaoulina var bez ar zant, en eur c'houlen pardoun dirak an oll.

SONJOMP ERVAD :

Ar zant-man, mignoun braz d'he roue gouskoude, en deuz enebet outan p'en deuz bet c'hoant mont eneb guirion an Iliz, hag a zo maro merzer. Arabat eo d'comp beza souezet, pa velomp hon eskibien hag hor beleien o sevel ho mouez eneb al lezennou, al leoriou, ar c'hazetennou fall: ho dever a reont, ha netra ken.

AN TREGONTVED DEVEZ A VIZ KERZU

Sant Meen pe Neven, Abad

Ganet e tro ar bloaz 520 e Bro-Zaoz, Neven a oa niz da zant Samson; mont a reaz da vanac'h er gouent renet gant he contr, goude ma oue achi he studi gantan.

En amzer-ze, Breiziz Bro-Zaoz a dec'he euz ho bro hag a zeue a vagadou da Vreiz-Izel: mac'het e oant gant eur ouen dud krenvoc'h evito. Eun eal a lavaraz da zant Samson mont ive da Vreiz-Izel, hag e sentaz kerkent: kas a reaz gantan eun toulladik diskibien, hag en ho zouez, Neven ha Magloar. Douara a rejont demdost d'al leac'h m'ema Dol, en eskopti Roazon brema.

Eno, tost d'an aod, Samson a zavaz eur gouent, eno e oue kanet meuleudiou an Aotrou Doue, ae'hano Samson a iea d'ober baleou tro var dro evit prezeg an Aviel: kas a rea gantan peurliesar ar manac'h Neven a oa bet beleget abalmour d'he zantelez ha d'he zeskadurez.

Ar c'houmt Konomor, muntret he bried santez Trifina hag he vab sant Tremeur, a voallgase neuze Breiziz; Samson, gant truez ouz an dud, a reaz da Neven mont da gaout ar c'houmt Guerko da Venet, evit en em glevet gantan divarbenn diskar Konomor, ha lakât en he leac'h ar prins iaouank Judual, mab d'ar c'houmt Iona, en doa renet an hanter euz Breiz-Izel araok Konomor. Neven a zentaz dioc'htu: treuzi a reaz ar c'hoat braz hanvet neuze koat Douna, a c'holoe ar vro oll a zo etre Kerahes, Roazon ha Guened; komz a reaz gant ar c'houmt Guerok.

Eun nebeud bloaveziou goude, er bloaz 554 pe 555, Judual, e penn he Vreiziz, a c'hellaz beva e peoc'h.

Pa oa Neven o treuzi ar c'hoat Douna, en doa kavet ennan enn den hag en doa torret kalz douarou gouez, ha

pedet ar zant da zont da veva en he gichen. Samson a aotrez Neven da zistrei di gant eun nebeut euz he venec'h ha da zével eno eur gouent: Neven a lavaraz kenavezo d'he contr santel, hag a ieaz d'ar c'hoat braz.

Kaduon, an den a veve eno, a roaz d'ezo douar kement ha m'o dije c'hoant kaout; ar venec'h a stagaz prim d'al labour. Sevel a rejont eul lochen evit pep hini anezo, eun orator a oue great e kreiz, dindan hano sant Ian Vadezour, skouer ar vuez piniennuz, da c'houde ar venec'h a zaouhantere ho amzer etre ar beden hag al labour. Dizale, eun dachen vrao a zouar a oue gounezet, hag an ermited o devoue peadra da veva; ne oa ket a zour eien, met Neven a bedaz, ha dour eur feunteun a redaz kercent. Al loened gouez a freuze an douar labour hag a zamme ar chatal, Neven a bedaz adarre, hag a c'houe hemennaz d'ezo, en hano an Doue Oll-C'halloudeg, choum heb dont d'ober drouk ebet ken. Neven a oue abad kenta ar gouent: eno ema brema bourk Gael.

Neven a c'houarnaz santelamant he venec'h, mad e oa da zifen eneb an dud kriz ha gallouduz, an dud diste a deue da c'houlen skoazel, sikour digantan. Pa velaz ez ea mad an traou en he gouent, an abad santel a ieaz da bardouna da Roum; eno e pedaz kalounek var beziou an ebestel.

D'an distro, ar zant a stoliaz eur zarpant heuzuz e kichen Angers, hag a reaz d'ezan en em daoler er ster al Loire: ar zarpant-se, var a lavar an historiou koz, a laze tud ha loened, evel dragon enez Vaz. Sant Neven a zavaz er vro-ze eur gouent hanvet Monopalm, hag a joumaz eun nebeut bloaveziou eno, da ren ar venec'h iaouank.

Erfin, goude beza distroet etouez he ziskibien muia karet e Gael, ar zant, leun a veritou, a lavaraz kenavezo er baradoz d'he venec'h, d'an 21 a viz even euz ar bloaz 617, var a greder.

SONJOMP ERVAD :

Klevet a reer tud diskiant o lavaret avechou: « Ar ve- » leien, ar venec'h n'int morse bet mad da netra. » Eur

protestant, Gibbon, unan euz ar re o deuz anavezet ar guella histor hor bro, rak n'en deuz great nemet studia hed he vuez, a respount: « An eskibien hag ar venec'h o deuz great » ar Frans, evel ma ra ar guenan ho c'hesten. »

E guirionez, lenn a reer aliez aoualc'h e Buez ar Zent ne oa guechall skol ebet er vro, nemet skoliou ar venec'h; guelet a reomp hirio sant Samson o klask an tu da zivec'hia Breiziz goasket gant Konomor, guelet a reomp sant Neven o tifen an dud diste enep an dud gallouduz. An Iliz a zo bet hag a vezo e peb amzer madoberourez an oll, met an dud diste dreist oll eo o deuz bet ar muia sikour diganti, rak int-hi eo o deuz ar muia ezom da veza sikouret.

Bezomp ato leun a respet evit an Iliz hag an dud a Iliz.

AN UNAN HA TREGONT A VIZ KERZU

Sant Sylvestr, Pab

(270-335)

Ar zant-man a zo ganet e Roum. He dad hag he vam a oa tud devot, ha karantezuz ouz ho nesa. O veza ma c'houient peger mad eo lakât ar vugale etre daouarn mistri-skol vertuzuz, e kasjont anezan da di eur beleg santel, he hano Sirin. Dindan eun hevelep mestr, Silvestrik a deuz, e berr amzer, da veza habil ha devot meurbet.

Evel he dad hag he vam, e oa ive karantezuz evit he nesa, a vianik memez. Ar pab Melkiad o velet ar vuez santel a rene an den iaouank, her greaz avieler.

Abars nemeur, ar vrud euz he garantez evit Doue, euz he vadelez evit an nesa, hag ive euz he zeskadurez vraz a rea d'an oll diredet d'he gaout. He zor a veze bepred digor d'ar beorien a deue da c'houlen digantan an aluzen, ha d'ar gristenien all a deue da c'houlen eun ali mad benag.

Setu perak, pa varvaz ar Pab sant Melkiad, Silvestr a oue hanvet en he blas.

Betek neuze, an iliz a oa bet atao goall-gaset gant Impalaered Roum. Gouzanv e doa great, peurliesia, persekusion, kalz pe nebeut, euz ho ferz; met, eur bloaz araok ma oue lakeat Silvestr da Bab, ar peoc'h a oa bet rentet d'ar gristenien. Guelet on deuz, da c'houel ar Groaz Kavet, ar groaz o rei an treac'h da Gonstantin var he enebourien. Divar neuze, an impalaer a ziskouezaz he anaoudegez vad da Jesus-Christ; Konstantin a zinaz ar peoc'h gant an Iliz ha gant ar gristenien. Ouspenn-ze, an impalaer a zougaz meur a lezen; urz a roaz, dreist-oll, da viret ar zul ha da jom heb labourat da genver an devez-se konsakret d'an Aotrou Doue. Konstantin n'en doa ket c'hoaz resevet ar vadiziant: ar Pab Silvestr her roaz d'ezan.

Divar neuze, ar Pab hag an impalaer en em glevaz ho daou evit diazeza da vad ar peoc'h gant ar relijion gristen, er rouantelez a-bez. Ar Pab Silvestr a zavaz, e Roum, eiz iliz euz ar re gaera. Gant an dra-ze, e skrivaz eul leor evit digeri ho daouagad d'ar Juzevien, hag ober d'ezo kredi e Jesus-Krist.

En amzer-ze, eun den dallet gant he ourgouill, he hano Arius, a rea poan d'an Iliz, dre he vlasfemou skrijuz. Petra benag m'en deuz Hor Zalver Jesus-Krist, epad he vuez var an douar, diskouezet sklear dre he viraklou, ez eo Doue; petra benag m'en deuz hen diskouezet sklearoc'h c'hoaz, goude he varo, p'e guir, d'ar zul Fask, e savaz leun a vuez euz ar bez, evel m'en doa disleriet; Arius a lavare ken divergont ha tra: « Nan, » nian, Jesus-Christ, n'eo ket Doue ! »

Gant skoazel an Impalaer Konstantin, ar Pab Silvestr a vodaz e kear Nisee, eur c'honsil braz: tri c'hant trivac'h Eskop a gemeraz perz ennan.

Arius he-unan a deuaz d'ar c'honsil. Klask a reaz difen he lavarou, met kaer en devoue, an oll eskibien a zavaz eneb d'ezan. Tadou ar C'honsil goude m'o devoue diskleriet ne oa ket ar virionez gant Arius, her c'houndaonaz evel eun den a du gant an ifern, evit koll an

eneou. Goude-ze en eur vouez, an oll eskibien a lavaraz: « Jesus-Christ a zo Doue a oll-viskoaz. A-unan gant he » Dad Oll-C'halloudek, en deuz krouet an env hag an » douar. Evitan da veza henvel ouz he Dad, e peb tra, » mab Doue a zo en em c'hreat den. Kement-se a zo » merket er Skritur Zakr, ha, dreist-oll, e leor an Aviel. »

Kannadet ar Pab o doa renet ar C'honsil, ha Silvestr a zinaz, laouen, lavarou ha setans an eskibien. Poania a reaz, da c'houde, da zifazia ar re a oa bet touellet gant Arius, ha ren a reaz an Iliz dek vloaz all c'hoaz.

Kalz a eneou a c'hounezaz, dre he zouder hag er memez amzer dre an nerz-kaloun a ziskoueze, bevech ma veze red d'ezan beza stard, evit gloar Doue.

Mervel a reaz, d'an unan ha tregont a viz kerzu euz ar bloaz 335.

SONJOMP ERVAD :

Setu achu eur bloaz all. Doue en doa he roet d'eomp evit he zervicha, he garet, ha gounit ar baradoz; guelomp hag implijet or beuz oll miziou, oll sizuniou, oll deveziou ar bloaz-man, e giz ma c'houlenne Doue diganeomp. Ma vijemp maro er bloaz-man, e pe leac'h e vije brema hon ene paour? Marteze, siouaz! en ifern.

Trugarekaomp an Aotrou Doue da veza kemeret pasiant-tet ganeomp. Goulennomp pardoun digantan euz ar pec'hedjou or beuz great, epad ar bloaz-man, ha leveromp da Zoue: « Va Doue gant sikour ho kras, me a vezo guelloc'h » er bloaz a zeu; ar bloavez-se a vo marteze an diveza » evidon. »



Daoust ma n'eo ket lakeat c'hoaz Dom Mikeal Nobletz hag an Tad Maner e renk an Dud eüruz gant Hon Tad Santel ar Pab, e lakeomp ama eun diverra euz ho Buez.

An Aotrou Mikeal An Nobletz (1577-1652)

An den santel-man, choazet gant Doue evit sklerijenna hor bro dre ar misionou a roaz, a oa ganet e maner Kerodern, e Plougerne, da zeiz gouel sant Mikeal euz ar bloaz 1577; en devez-se e oue badezet.

Galvet gant Doue da ober traou braz, ar paotrik a oue diouallet abred gant ar Verc'hez Gloriuz Vari; ar vam vadman a rene anezan, dre an dourn, pa ne oa nemet pevar bloaz, da vont da bedi e chapel Sant-Glaoda, tost da vaner Kerodern. An itroun Nobletz e doa beac'h o kredi Mikealik pa lavare d'ezi e veze renet gant eun Itroun gaer ha skeduz, hag a brennaz eun devez an or var ar bugel, mes heman a ieaz er memez tra da ober he beden d'ar japel: ar Verc'hez e doa dibrennet varnan.

E maner Kerodern e oue unnek krouadur; ho zad a reaz d'an oll poania ha deski, evit gellout kaout ho bara gant eur renk deread etouez an dudchentil. Mikealik a oue da genta skoliet gant beleien; d'he zek vloaz e oue kaset da Blouzeniel, eno e oa, d'ar mare-ze, eur skol grenv.

Ober a rea, neuze dija, pinijennou kalet, hag an droukspered o veza deut eun devez d'he denti enep ar vodesti, ar paotr en em ruillaz etouez an drez hag ar spern, evel n'en doa lennet o doa great ar zent. Abalamour m'oa bet mad da enebi dioc'htu, ha ma kendalc'haz da c'houde, Doue a reaz d'ezan miret ar burete hed he vuez.

Evit deski muioc'h, Mikeal a oue kaset da Vourdel, di ez eaz eaz aoualc'h dre vor; ac'hano ez eaz da Ajen evit peurachui he studi en eur skol zantelloc'h. Eno an den iaouank, boaz da iun ha da ober pinijen, a bedaz ar Verc'hez a greiz kaloun: devot oa bet d'ezi hed ar vech. Hag eun devez, er bloaz 1600, ar Verc'hez en em ziskouezaz dirazan, hag a roaz d'ezan teir gurunen: hini ar guerc'hdet, hini an doktored, hag hini an disprijans evit ar bed.

Distrei a reaz da Vourdel da zeski an theoloji, great e oe doktor ha ne deo souez: gouzout a rea ar Skritur Zakr penn da benn dindan evor, e gregach.

Neuze e teuz d'ar gear: Doue a roc d'ezan da entent e tlie beza beleg, mes evel c'hoant en doa; guech, da vont etouez an Tadou Jesuisted, guech e renk menec'h sant Fransez, guech all da joun er bed: hag e choume nec'het.

Dont a reaz d'ar gear, hag an tad a oue foug ennan, o velet he vab desket braz; he gas a reaz da gaout Aotrou 'n Eskoj Kastell da ziskouez eno he vouiziegez: eun *disput* braz a oa da gaout etre ar re zesketta var an theoloji hag ar Skritur Zakr. An oll a oue souezet o velet pegen desket oa Mikeal an Nobletz, hag an Aotrou 'n Eskop a lavaraz d'ezan: « Va mignoun, resevit an' Ursiou Sakr, hag o pezo » unan euz ar parrezioù guella en eskopti. »

An den iaouank a zistroaz d'ar gear; aoun en doa da gaout eur barrez da ren.

He dad a egaraz outan p'her guelaz distro, heb beza lavaret ia d'an Aotrou 'n Eskop: « Tad, a respountaz Mikeal, kredi a ran oun galvet gant Doue da rei misionou, » ha n'eo ket da ren eur barrez eo; guelloc'h eo ganen » mont da ziuall al loaned er park eget ne deo ren eur » bobl tud. »

— « It, va mab, a respountaz an tad, it d'ho c'has d'ar » park, mes ne jomuit mui var va zro. »

Mikeal a ieaz da Baris evit beza beleget, mes distrei a reaz dioc'htu da Blougerne, eno eo e lavaraz he oferen genta.

Araok prezeg d'an dud, Mikeal en em dennaz e Tremennac'h; eno, var aod ar mor braz, e veler c'hoaz ar japel a zo bet savet e plas he doull-ti. Eno e vevaz bloaz er retred, heb ober an disterra kaoz gant den nemet gant he dad kovezour, pa 'z ea d'he gaout; o pedi heb ehan, o yun aliez, o kastiza he gorf dre binijennou rust.

Er bloavez-se, oc'h entent eo diez d'an dud dizek anaout guirioneziou ar relijion gristen, e reaz an taolennou kenta. Eur vech achu he retred, Mikeal an Nobletz, guisket paour, a stagaz gant labour ar misionou, hag a sklerijennaz da genta tud he barrez. He dad hag he vam, mez ganto o velet ho mab guisket fall, o vont da ober katekiz euz an eil kerriaden d'eben, o veva ken dishenvel diouz ar veleien all, a reaz fae varnan da genta, mez ar beleg santel, dre nerz he bedennou, a reaz d'ezo chench.

E kouent Sant-Dominik e Montroulez e oa eun tad, an tad Kintin, bet er skol e Bourdel hag en Ajen gant Dom Mikeal an Nobletz; ar beleg iaouank a ieaz da velet ar manac'h, hag a c'houlennaz beza resevet er gouent.

Digemeret e oue gant plijadur, mes ne c'hellaz ket choum, bolontez Doue a ioa ma roje misionou en eur vont atao el leac'h ma plijfe gant Doue, heb kaout eur superior hag en dije bet da velet varnan hed he vuez.

Kaset euz ar gouent, Mikeal a zoublaz he benn; fae a reat varnan, gouzanv a reaz heb klemm; el leac'h koll kaloun, ec'h en em roaz neuze da vad d'ar misionou. Mont a reaz da genta da Gonk-Lokrist, pe Gonk-Leon; eno, hag e Beg Sant-Vaze, porz-mor d'an ampoent, e oa kalz tud o choum, ha kalz vad da ober.

Dom Mikeal a gemeraz kalz poan gant an dud a vor, koulz ha gant ar goueriated. Disprijet ha goall gaset e oue, n'euz fors: kendelc'her a reaz. Diskuillet e oue d'an Aotrou 'n Eskop evel eur penn skanv, eun den diboell.

An diaoul a reaz he c'halloud evit freuza labour an den santel, mes gant sikour gras Doue, e teuz a benn atao da vont var araok.

A nebeudou, ar goazed a zelaouaz he brezegennou, hag a jenchaz buez. Neuze, Dom Mikeal a c'halvaz unan euz he c'hoarezed da ober katekiz d'ar merc'hed a ioa azenna var ho relijion.

Euz a Gonk ar zant a ieaz da ober baleou tro var dro, evit sklerijenna an dud; kristenien oant dre ho badiziant, mes eur c'halz anezo n'o doa koulz lavaret deskadurez kristen ebet.

E Landerne, kear pinvidik d'ar mare-ze, eo e tisplegaz an den santel he daolennou evit ar vech kenta: ar mision a oue roet eno er bloavez 1614.

Er bloaz varlerc'h, ar zant a roaz eur mision e Kemper, hag o veza m'edo nec'het o klask gouzout da be leac'h mont da c'houde, ar Verchez a ziskouezaz d'ezan Ploare. Dom Mikeal a drugarekeaz ar Verchez hag a zentas: euz 1615 betek ar bloaz 1640, e choumaz e Ploare pe e Douarnenez, evit mont ac'hano da rei misionou a gleiz hag a zeon. An diaoul, meur a vech, a glaskaz diarbenn an den santel, eur vech zoken e skoaz gantan betek ma oue red d'ezan choum en he vele pevar devez, broustet ha goullet he gorf oll; mes Dom Mikeal a gendalc'he da labourat evit silvidigez an eneo e Kerne, Leon ha Treguer.

Sonj en doa da vervel e Douarnenez, mes Doue a reaz d'ezan distrei da Gonk.

Er bloaz 1648, e c'houlennaz digant Jesus ar c'hras da c'houzanv poanion eun den stag ouz ar groaz, ha Doue a roaz ar c'hras-se d'ezan evit kaerât he gurunen. Choum a reaz seiz miz seizet var he vele heb gellout finval; er penn diveza euz he glenved, e c'houzanvaz teir angouni. Gervel a reaz d'he velet an Tad Kintin, he vignoun-koz, an Tad Maner a dlie kendelc'her ha peur-ober he labour en eur rei misionou var he lerc'h; rei a reaz d'ezan he genteliou diveza hag he vennoz. Neuze, dinerzet gant an oad, gant he labourou, gant he garantez birvidik evit Doue, an den santel a rentaz he ene d'he Grouer, d'ar 5 a viz mae euz ar bloaz 1652, en eur gampr hag a zo great eur japel anezi abaoue.

He gorf a oue sebeliet en iliz Lokrist, met pa oue savet an iliz a veler breman e Konk, hag a zo bet konsakret er bloaz 1858, relegou an den santel a oue douget d'an iliz nevez.

Goulen a reer digant Hon Tad Santel ar Pab diskleria ema Dom Mikeal e renk an Dud eüruz er baradoz, met an Tad Santel a rank pocza mad peb tra, araok lavaret he c'her: gortoz a ra ma rafe an Den Eüruz burzudou nevez, evit diskouez he c'halloud.

An Tad Julian Maner

(1606-1683)

An den santel Mikeal an Nobletz en doa lavaret meur a vech: « Dont a raio eun all var va lerc'h, hag a beure'hrai » va labour. » Komz a rea euz an Tad Maner, her guelet a reaz meur a vech, mervel a reaz etre he zivreac'h e Konk-Leon.

Ganet d'ar c'henta a viz guengolo euz ar bloaz 1606, en eur bourk euz eskopti Roazon, Julian Maner a oa dister he dud. Eur beleg a roaz d'ezan ar c'henta kenteliou var al latin, ha goude-ze ar paotrik a oue lakeat var ar studi e Roazon, e ti an Tadou Jesuisted.

Renerien ar skolach, o velet furnez ha deskadurez ar paotr iaouank, a reaz d'ezan mont da Baris da achui he studi, eno e oue resevet e kouent an Tadou d'he ugent vloaz. Eur beden a reaz neuze da Zoue, hag a verk d'comp peger santel e oa dija; lavaret a rea: « Va Doue, mar doun brema » e stad a c'hras, ha ma velit e tlean he c'holl dre eur pe- » c'hed benag, grit ma varvin kentoc'h eget hoc'h offansi, » ha pa ve red d'in choum er purkator betek deiz ar varn » ziveza. »

Achu he studi gantan, e oue kaset da Gemper, da di an Tadou Jesuisted, d'ober skol. Eun devez ma oa eat gant ar vugale e pelerinach d'eur japel brudet, hanvet Ti-Mam-Doue, e Kerfeunteun, e velaz en eur sklerijen gaer eskoptiou Kerne, Leon, Treguer, Sant-Briek ha Guened evel eur park braz, digor d'he labour, hag e santaz he galoun devet gant eur garantez birvidik evit an eneo. Hag e lavaraz kerkent d'ar Vere'hez Vari: « Va Troun dous ha madelezuz, » mar kirit deski d'in ar brezounek, her gouezin mad di- » zale, hag e c'hellin gounit servicherien d'eoc'h ha d'ho » Mab. »

Peden an Tad iaouank a oue selaouet. Studia a reaz ar brezounek, hag eiz dez goude, e c'helle ober katekiz d'an dud e brezounek er japel; daou viz divezatoc'h, e c'helle prezeg e brezounek heb beza zoken skrivet he brezegenn araok.

Neuze e reaz katekiz d'an dud divar ar meaz, tro var dro da Gemper, epad ma kendalc'he d'ober skol, setu ma kouezaz klanv: ober a rea re. Kaset e oue gant he superiozed da Dours da barea, ha da c'houde ez eaz da Vourj da studia an theoloji; eno e oue eur skouer evit an oll.

Koueza a reaz klanv adarre, hag e reaz da Zoue a galoun vad, sakrifis he vuez, mes eun devez ec'h en em velaz, dre he gousk, oc'h ober hent, eun den euz a eskopti Kerne gantan var he chouk. Entent ar eaz raktal oa galvet gant Doue da zavetei eneo, hag e reaz eur beden evit goulenn ar pare.

Doue a roaz ar pare-ze d'ezan; beleget e oue, e Bourj, er bloaz 1638, ha distrei a reaz da Gemper evit entent ouz an dud klanv gant ar vosen vraz: kas a reaz ho zakramanchou da galz tud.

E miz eost 1640, Dom Mikeal a gemennaz d'ezan dont da Gonk, hag a roaz d'ezan he genteliou kenta hag he vennoz. Neuze ec'h en em roaz da vad da labourat, o rei misionou en

oll parresiou koulz lavaret euz eskoptiou Breiz-Izel: ho rei a reaz epad daou vloaz ha daou ugent.

Doue a roe nerz d'he brezegennou, rak an Tad a rea burzudou braz; ar vuez a rene a ioa kalet. E meur a leac'h e oue great fae varnan, mes hen a gendalc'he atao da vont gant he hent.

Dont a reaz beleien a galoun da zikour anezan en he labour, ha kovez a reant eun niver braz a dud, evit dizamma, hervez ho galloud, ar misioner santel.

Mont a reaz, er bloavezh 1652, da entent ouz Dom Mikeal an Nobletz, ha d'he zikour da vervel santelamant; kennerzet dre genteliou an den santel, e poaniaz gant muioc'h a galoun da c'houde.

Evit ober muioc'h a vad c'hoaz, e savaz retrejou evit ar goazed e Kemper: eno, en eun ti santel, e vije eaz d'ar re a garje sonjal epad eun nebeut deveziou en ho ene hag en ho zilvidigez.

Dre ma poanie da rei misionou, e kave muioc'h a veleien a volonteaz vad d'he zikour; lavaret a reer e oa e mision vraz Kastell-Paol tregont beleg o sikour an Tad en he labour epad eur miz.

Erfin, dinerzet gant an oad hag al labour, ar beleg santel a rentaz he ene kaer ha pur da Zoue, e parrez Plevin, tost da Geraes, d'an eiz var 'n ugent a viz genver euz ar bloaz 1683, d'an oad a zeitek vloaz ha tri-ugent.

Tadou Kemper a c'houlennaz kaout he gorf, mes kristenien Plevin a respountaz: « Hon Tad eo, en hon touez eo » maro, ha ganeomp-ni a choumo he gorf. »

An Aotrou 'n Eskop, evit ober d'ezo plega, a reaz hano da daoler an exkummunugen varno, mes tud Plevin a lavaraz: « Doue ne gavo ket fall e tiskouesfemp respet ha ka- » rantez evit relegou he veleg. » Ar c'horf a joumaz ganto, mes en nosvezioù kenta, he vez a oue diouallet mad; ar barresioniz o doa aoun ne vije deut Tadou Kemper da laerez ar c'horf dre guz.

N'eo ket heb abek o deuz poaniet tud Plevin da zalc'her relegou an Tad: pemp den da nebeuta a zo savet euz a varo da veo abalamour m'int bet erbedet d'ezan gant ho zud; n'euz kount ebet d'an dud klanv a zo bet paret dre vuzud e kichen he vez.

Goulenn a reer ma teufe Hon Tad Santel ar Pab da ziskleria ema an Tad Maner e renk an Dud eüruz.

Itzoun Varia Pontmeen

Er penn kenta euz ar bloaz 1871, pa rene ar brezel etre ar Frans hag ar Pruss, an enebourien a rea ho mistri e Paris, hag o doa kemeret Laval, er zonz dont e Breiz-Izel.

D'ar 17 euz miz genver, eun tiék, an tad Barbedett, a oa o pilat lann eur pardaez gant daou euz he vugale, Eujeen ha Joseph, en eur c'hranch euz bourk Pontmeen. Goude eur frapad labour, Eujeen, paotr daouzek vloaz, a ieas var an or d'ober eur zell ouz an amzer. Hag hen ha guelet eun Itron gaer en oabl: « oh! » emezhan kerkent.

He vreur Joseph, dek vloaz d'ezhan, a deuas buan er meaz, pa glevas ar ger-ze.

« Daoust ha guelet a res? a c'houlennas Eujeen digantan.

— Ia zur, eme Joseph. Guelet a ran eun itron gaer, gant eur zae c'hlaz, stered aour, varnhi. He zreid a zo en eur boutou mezer, gant *bouklou* aour.

— Lavar d'in, Joseph, ha guelet a res he c'hurunen?

— Ia, eur gurunen alaouret hag a 'z a var gresk dre ma pella he c'hern diouz an tal, gant eur rizen rus e kreiz. Dougen a ra ive eur voel zu. »

An tad, souezet o klevet lavarou ar vugale, a deuas d'ho c'haout, met na velas netra, nak ho mam ken nebeut. Houman a lavaras: « D'an daoulin, ha lavaromp pemp Pater en honor d'ar Verc'hez. » Ar beden a oue lavaret er c'hranch, rak an douar a oa goloet a erc'h.

An amezeien a glevas eun trouz benag, hag a deuas e kichen ar c'hranch; Sœur Vitaline, al leanez a rea skol, a oue galvet ive met nikun anezho na velas netra en oabl, netra, nemet ar stered a velent bemdez o lugerni. Sœur Vitaline a c'halvas neuze diou euz merc'hed bian ar skol, hag ar reman a velas dioc'htu: « Eun itron gaer, gant eur zae c'hlaz », emezho.

An aotrou Persoun a oue galvet d'he dro, met na velas ket an Itron ken nebeut. Etreant, an Itron a greske, dioc'h ma lavare ar vugale. Ha setu ma veljont padal eur c'helc'h bras, round hag hir evel eur vi, oc'h ober tro an Itron. Peder c'houlouen a oa er c'helc'h: diou dirak an daoulin,

ha diou dirak an dioukoaz. Eur groaz rus a deuas goude var bruchet an Itron. Mouez ar beleg a zavas neuze: « Pédomp! » emezhan.

Unan euz an diou leanez a oa eno var al leac'h a lavaras kerkent ar chapeled: an oil a respoune. Dre ma save ar beden, an Itron a greske, hag ar c'helc'h ganthi; ar zae a oa steredennet muioc'h mui. Eun darzod a lavaras neuze: « Na velan netra en oabl, met n'am befe eur mouchouer seis, da c'hellout sellet dreizhan, me a velle an Itron, koulz hag ar vugale. »

Barbedett a ieas da glask d'ezhan he c'houlenn, met an den na c'hellas guelet Itron ebet en oabl a dreuz he vouchouer seis, setu ma tirollas ar c'hoarz varnhan. Dre ma c'hoarze an dud, bizach an Itron a denvalca, eme ar vugale. Dies e kave guelet an dud o taoler evez var lavarou eun hanterzod, d'ar mare ma rea traou burzodus evit merka ar zikour a roe Doue d'ar Fransizien.

Goude ar chapeled, al leanez a ganas ar Magnificat, ha neuze e oue guelet en env, lizerennou aour skrivet hini hag hini, ha renket eun en oabl: « Met pedit, va bugale. »

Litanion ar Verc'hez, kanet e serr ar Magnificat, a reas d'an dud choum devot, hag ar vugale a lennas komzou all: « Doue ho selaouo e berr amzer. »

Mouez an aotrou Persoun a zavez adarre: « An Inviolata » brema. » Goude, e teuas ar Salve Regina, hag etretant, ar vugale a lennas: « Kaloun va Mab a deu da denerrât. »

Evit amprou ar vugale, al leanez a zispartias anezho, met kaer e oa kas anezho pell an eil diouz egile, e lennent eaz ar pez a oa evel skrivet var eun daolen dirak ho daoulagad, ne oue ket kavet eur mank e lavarou nikun anezho.

« Kanit eur c'hantik breman », eme c'hoaz an aotrou Persoun. Kanet e oue e galleg:

Mère de l'Espérance,

Dont le nom est si doux; etc.

hag epad ar c'hantik ar c'homzou a joumas skrivet en oabl, a vel atao d'ar vugale azioc'h ti Guidecoq, a vel d'ezho heben. Daouarn an Itron a oa troet varzu an douar, neuze e savas anezho ken huel hag he dioukoaz. « Oh! na kaer » eo! » eme ar vugale. Pa varvas komzou diveza ar c'hantik, al lizerennou a deuzas.

Kanet e oue neuze kantik ar binijen:

O va Jesus,

Setu deut an amzer, etc...

ha kerkent eur groaz rus ha bras, gant Hor Zalver leun c'hoad varnhi a oue guelelet dirak treid an Itroun. Hi a ble-gas neuze he daouarn, hag ar groaz a zavas betek enno. Diskoues a reaz ar groaz-se d'ar vugale, hag ar re-man a lennas: Jesus-Christ; skrivet gant lizerennou rus var ar penn huela anezhi.

Epad ma kanet ar c'hantik, gant ar *Parce Domine*, eur stereden lugernus a zavas betek ar peder c'houlouen, hag a entanas anezho. Ar stereden a zavas, da c'houde azioc'h penn an Itroun, hag a joumas eno.

Dioc'htu goude ar *Parce*, e oue kanet an *Ave Maris Stella*, hag etretant, ar grusifi ruz a ieas kuit Var peb hini euz diousoaz an Itroun, ar vugale a velas eur groaz ven, hag he daouarn a oa diskennet adarre varzu an dud.

Evit achui, e oue lavaret ar Bater dioc'h an noz, rak nao heur benag e oa, hag epad ar pedennou, an Itroun Varia na oue mui guelelet.

Ar Prussianed a oa a vel da vont e Breiz-Izel ha da rivina hor bro, pa oue guelelet ar Verc'hez e Pont-Meen, met ar c'homzou kenta a beoc'h a oue sinet antronoz. Ar brezel a oa achu.

Bloaz divezatoc'h, aotrou 'n eskob Laval, goude beza pouezet mad lavarou ar vugale hag ar re vras euz Pont-Meen, a zisklerias, en hano an Iliz:

Ar Verc'hez Glorius Vari a zo en em ziskouezet e Pont-Meen, d'ar 17 a viz genver 1871.

En devez-se eo e ves great, bep bloaz, gouel an Apparision, hag eun iliz euz ar re gaera a zo savet eno breman.



Pedennou diouz ann noz

E KERNE

*Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret*

Evit adori Doue

M'hoc'h ador, ma Doue, ma C'hrouer,
M'hoc'h ador, Jesus, ma Zalver;
Hirio ha keit ha ma vevin,
Ho servicha humbl a fell d'in.

Evit trugarekât Doue

M'ho trugareka, ma Aotrou,
Evit hoc'h holl madelezou:
D'am beza krouet, konservet,
Prenet, enn Iliz resevet.

Evit goulenn sklerijen da anaout hor pec'hejou

Roit d'in, va Jezuz, guir c'houlou
Evit anaout ma fec'héjou;
Sonjit, ma ene, em offansou,
Euvrou, komzou, sonjezonou.

Evit goulenn pardoun euz hor pec'hejou

Keuz am euz da veza offanset
Ma Doue din da veza karet.
Me a bromet en em viret,
Gant gras Doue, diouz peb pec'hed.

Evit pedi ar Verc'hez

Guerc'hez Vari, mam benniget,
Var ma maro ma zikouret,
Guerc'hez Vari, mam da Zoue,
O pet truez ouz ma ene.

Evit pedi an El-Mad

Ha c'houi, ma El-Mad, kannad Doue,
Miret ma c'horf ha ma ene,
Ma miret ouz ann drouk-spered
Ha dreist peb tra diouz peb pec'hed.

En honor d'hor Patron pe d'hor Patronez

Ma faeron, ne veritan ket
Dougen an hano a zouget;
Goulzkoude, pa 'm euz an honor,
O pet truez ouz ho fillor.

Ar merc'hed a lavaro:

Ma maeronez, ne veritan ket
Dougen an hano a zouget;
Mes me ho ped, ma maeronez,
O pet sonj euz ho fillorez.

Evit pedi Jesus-Krist hag ar Zent

Jezuz, Mari ha Joseph, Anna ha Joachim,
Sant Mikael, ma El-mad, sant Per, sellit ouzin;
Ma faeron, santez Barba, gloriuz sant Korantin,
Brema ha var ma maro o pet truez ouzin.

E LEOUN

*En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet great*

O Tad, Mab ha Spered-Santel,
Me gred oc'h eun Doue eternal,
Krouer an holl, partout prezant,
Me hoc'h ador devotamant.

Me gred oc'h tri fersoun divin,
Ho zri ker braz, ker fur, ker din,
Distink an eil diouz egile,
Eun Doue ho zri, non pas tri Doue.

Me gred oc'h just ha gallouduz
Da rei d'an drouk ha d'ar vertuz
Dioc'h ar mirit ar rekoumpans,
Punision diouz an offans.

Me gred an inkarnasion
Ha mister hon redempcion:
C'houi, Mab Doue en em c'hreat den
Evit prena 'n natur humen.

M'oc'h ador, Jezuz, va Zalver,
Er zakramant euz ann aoter;
Me gred emac'h enghan prezant,
Guir den, guir Doue realamant.

Konsakri a ran va nozvez
D'ho kloar ha d'am zilvidigez,
Hag ec'h offran va holl boaniou
E pinijen d'am fec'hejou.

Eksaminomp hor c'houstians

Pardoun, va Doue trugarezuz,
Pardoun, en hano va Jezuz;
Keuz am euz 'balamour d'ehoc'h,
Gant ho kras me jencho pelloc'h.

Guerc'hez Vari, guir Vam Doue,
C'houi zo va fizians 'n he c'houde,
Ha c'houi, sant Joseph, he fried,
Ouzhoc'h ho taou m'en em erbed.

O Kaloun sakr euz va Jezuz,
Kaloun meurbet karantezuz,
Ra viot da viken karet
Ha da virviken adoret!

E TREGUER

*Enn hano ann Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evelse bezet gret*

Akt a fe var brezans Doue

Va Doue, me gred fermamant,
Penaos ezoc'h ama prezant,
Rak-se gant guir humilite
Me rent hommach d'ho majeste.

Akt a adorasion

M'hoc'h ador, Doue, va C'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va Zalver,
C'houi eo va mestr ha va roue,
Ha deoc'h oün tout korf hag ene.

Akt a drugare

M'ho trugareka, va Aotrou,
Demeuz hoc'h holl madelezou,
D'am beza krouet ha prenet,
Hag en hoc'h Iliz resevet.

Akt a offrans

Kement a rinn, a livirin,
A zonjin pe a andurin,
A offran holl da c'hloar Doue,
Dreizhoc'h Mari, mam a drue.

Eksamin a goustianz

Va Jezuz, roit d'in sklerijen
Evit ober va eksamen,
Hag eur gontrision barfet
A gement pec'hed am euz gret.

Akt a gontrision

Va Doue, me zo glac'haret
D'ho pea kement offanset,
Abalamour d'ho madelez,
D'ho majeste, d'ho santelez.

Resolusion

Me a bromet d'en em viret
Gant gras Doue, ouz peb pec'hed,
Spesialamant ouz ar re
Ma oun muia kustum d'ezhe.

Akt a c'houlen

Sellit ouzin, o va Jezuz,
Roit d'in eur c'hras presiuz,
Ar c'hras d'ho servicha fidel
Ha d'ho karet beteg mervel.

Peden d'ar Verc'hez

Guerc'hez, va mam garantezuz,
Va rekommandit da Jezuz.
Guerc'hez, va mam ha va itron,
Me rekommand d'ehoc'h va c'halon.

Peden d'ann El-Mad

Ma El-Mad, messenger Doue,
Miret va c'horf ha va ene,
Va miret ouz ann drouk-spered
Ha dreist peb tra ouz ar pec'hed.

Peden d'ann holl Zent

Me ho ped. Sent ha Sentezed,
Da vea va alvokaded,
Obtenit d'in digant Jezuz
Eur maro mad hag evuruz.

Evit henori Doue ha goulen he zikour

Pater noster, qui es in cœlis, sanctificetur nomen tuum; adveniat rēgnum tuum; fiat voluntas tua, sicut in cœlo et in terrā; panem nostrum quotidianum da nobis hodie; et dimitte nobis debita nostra, sicut et nos dimittimus debitoribus nostris; et ne nos inducas in tentationem; sed libera nos a malo. Amen.

Hon Tad, pehini zo en env, hoc'h hano bezet santifiet; roit d'eomp ho rouantelez; ho polontez bezet great var ann douar evel en env; roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek; pardounit d'eomp hon offansou, evel ma pardounomp d'ar re o deuz hon offanset; ha na bermettit ket e kouesfemp e tentasion, mes hon dilivrit a zrouk. Evelse bezet great.

Evit pedi hag henori ar Verc'hez

Ave, Maria, gratia plena, Dominus tecum, benedicta tu in mulieribus, et benedictus fructus ventris tui, Jesus. Sancta Maria, mater Dei, ora pro nobis peccatoribus, nunc et in horā mortis nostræ. Amen.

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, ann Aotrou Doue zo ganeoc'h, benniget oc'h dreist ann oll gragez, ha benniget eo ar frouez euz ho korf, Jezuz. Santez Mari, mamm da Zoue, pedit evidomp pec'herien, breman hag en heur euz hor maro. Evelse bezet great.

Evit anzañ guirioneziou ar Feiz

Credo in Deum Patrem omnipotentem, creatorem cœli et terræ, et in Jesum Christum, Filium ejus unicum, Dominum nostrum, qui conceptus est de Spiritu Sancto, natus ex Mariâ virgine, passus sub Pontio Pilato, crucifixus, mortuus et sepultus; descendit ad inferos, tertiâ die resurrexit à mortuis, ascendit ad cœlos; sedet ad dexteram Dei Patris omnipotentis inde venturus est judicare vivos et mortuos. Credo in Spiritum Sanctum, sanctam Ecclesiam catholicam, Sancto-

rum, communionem, remissionem peccatorum, carnis resurrectionem, vitam æternam. Amen.

Me gred e Doue, an Tad oll-c'halloudek, krouer an env hag an douar, hag e Jezuz-Krist he Vab unik, hon Aotrou, pehini zo bet konsevet dre vertuz ar Spered-Santel, ganet gant ar Verc'hez Vari, en deuz gouzanvet dindan Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro ha sebeliet; a zo diskennet d'an iferniou; resusitet d'an trede deiz euz a varo da veo; a zo pignet en env, hag azezet enn tu deou da Zoue an Tad oll-c'halloudek; ac'hano e teui da varn ar re veo hag ar re varo. Me gred er Spered-Santel, en Iliz santel katholik, communion ar Zent, remission ar pec'hejou, resurreksion ar c'hig, ar vuez eternel. Evelse bezet great.

Evit goulen pardoun euz hor pec'hejou

Confiteor Deo omnipotenti, beatæ Mariæ semper virginis, beato Michaeli archangelo, beato Joanni Baptistæ, sanctis apostolis Petro et Paulo, omnibus Sanctis (et tibi Pater), quia peccavi nimis cogitatione, verbo et opere: meâ culpâ, meâ culpâ, meâ maximâ culpâ. Ideo precor beatam Mariam semper virginem, beatum Michaellem archangelum, beatum Joannem Baptistam, sanctos apostolos Petrum et Paulum, et omnes Sanctos, orare pro me ad Dominum Deum nostrum.

Me govez ouz Doue oll-c'halloudek, ouz ar Verc'hez gloriuz Vari, ouz an Aotrou sant Mikeal arc'hel, ouz an Aotrou sant Ian-Vadezour, ouz an ebestel sant Per ha sant Paol, hag ouz an oll Zent, abalamour m'am euz pec'hed braz, dre zonz, dre gomz, dre ober: dre va faot, dre va faot, dre va brasa faot. Rak-se e pedan ar Verc'hez gloriuz Vari, añ Aotrou sant Mikeal arc'hel, an Aotrou sant Ian-Vadezour, an ebestel eürus sant Per ha sant Paol, hag an holl Zent, da bedi Doue evidon.

Evit karet Doue hag hon nesa

GOURC'HEMENNOU DOUE E KERNE

1. Eun Doue hebken a adori
Ha dreist peb tra holl a gari.
2. Heb guir he hano na doui ket,
Nag ive netra all ebed.
3. Miret a ri an holl zuliou
Gant euvrou mad ha pedennou.

4. Da dad, da vam a henori,
Ha da vuez a astenni.
5. Ha mir ne lazi den ebed
Nag a galon, nag a effet.
6. Lubrik mir na vezi nepred,
Dindan boan da veza daonet.
7. En em ziuall diouz laeronsi,
Na dommaj d'az hentez na ri.
8. Na gevier na fals testeni
Mir birviken na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil n'em em bliji.
10. Madou re all ne zezir ket
Evit ho c'haout heb guir ebed.
Setu aze
Gourc'hemennou Doue,
Lezen a garante,
'Vit silvidigez hon ene.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ E KERNE

1. Kleo devot abenn-da-benn,
Bep sul, bep gouel, ann offeren.
2. Neuze peb labour a lezi,
Evit da Zalver henori.
3. Kovez a ri, da vihana,
Eur vech er bloaz heb nac'h netra.
4. Ha da Bask e sakramanti,
Rak-se e stad vad e vevi.
5. Iun a ri an daouzek deziou,
Ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Kig, nemet eur gouel berz a ve
Da vener na zibri morse.

GOURC'HEMENNOU DOUE E LEOUN

1. Eun Doue hebken a adori,
Ha dreist peb tra holl a giri.
2. E vean he hano na doui ket,
Nag ive netra all ebed.

3. Ar zuliou santel a viri
E servich Doue, ouz he veuli.
4. Da dad, da yam a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Diouall na lazi den ebed.
Nag a zezir, nag a effet.
6. Lubrik na vezi ket ivez.
Nag a gorf, nag a volontez.
7. Laerez na miret madou den,
E gouiziegez na ri biken.
8. A enep den fals testeni
Na gaou ebed na liviri.
9. Na c'hoanta dre luksur pec'hi,
Nag e sonj vil n'en em lezi.
10. Na souhet madou da hentez,
Evit ha c'haout dre falzentez.

GOURC'HEMENNOU AN ILIZ E LEOUN

1. Ar goueliou berz a zantifii,
Neuze peb labour a lezi.
2. Ha kleo devot a benn-de-benn,
Sul ha gouel berz, ann offeren,
3. Eur vech er bloaz, da vihana,
E kovesai heb nac'h netra.
4. Ha da Grouer a resevi,
Da Bask, devota ma c'helli.
5. Iun a ri ann daouzek deiziou,
Ar c'horaiz hag ar vijilou.
6. Kig, nemet eur gouel berz a ve,
Da vener ne zebri morse.

GOURC'HEMENNOU DOUE E TREGER

1. Eunn Doue hebken a adori
Ha dreist peb tra holl a giri.
2. Doue enn vean na doui ket,
Na netra all demeuz ar bed.
3. Ar zuliou santel a viri,
Evit Doue ma servichi.

4. Da dad, da vamm a henori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Muntreer ne vi e nep feson,
Nag a effet, nag a galon.
6. Diouall ouz al lubrisite
Nag a gorf, nag a volonte.
7. Dommach ebed da zen na ri,
Mar ac'h euz gret, az rapari.
8. Gevier na nep fals testeni
Mir birviken na liviri.
9. Ne c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag enn sonj vil n'en em bliji.
10. Madou re all ne zezir ket
D'ho c'hemeret heb lealdet.

GOURC'HEMENNOU ANN ILIZ E TREGER

1. Kleo devotamant penn-da-benn,
Bep sul, bep goel, ann offerenn.
 2. Santifia ri ar goeliou
Var ho hed, evel ar zuliou.
 3. Kovez da bec'hejou heb mez,
Da vihana bep bla eur vech.
 4. Korf da Zalver a resevi,
Enn amzer Bask, heb diferi.
 5. Iun a ri ann daouzek deiou,
Ar c'horaiz hag ar vijilou.
- Da voener kig na zebri ket,
Nemet goel berz vije miret.

LITANIOU AR VERC'HEZ

Kyrie, eleison.
Christe, eleison.
Kyrie, eleison.
Christe, audi nos.
Christe, exaudi nos.
Pater de cœlis, Deus, miserere nobis.
Fili, redemptor mundi, Deus, miserere nobis.
Spiritus Sancte, Deus, miserere nobis.
Sancta Trinitas, unus Deus, miserere nobis.

Sancta Maria, ora pro nobis.
 Sancta Dei genitrix,
 Sancta virgo virginum,
 Mater Christi,
 Mater divinæ gratiæ,
 Mater purissima,
 Mater castissima,
 Mater inviolata,
 Mater intemerata,
 Mater amabilis,
 Mater admirabilis,
 Mater boni consilii,
 Mater Creatoris,
 Mater Salvatoris,
 Virgo prudentissima,
 Virgo veneranda,
 Virgo prædicanda,
 Virgo potens,
 Virgo clemens,
 Virgo fidelis,
 Speculum justitiæ,
 Sedes sapientiæ,
 Causa nostræ lætitiæ,
 Vas spirituale,
 Vas honorabile,
 Vas insigne devotionis,
 Rosa mystica,
 Turrus Davidica,
 Turrus eburnea,
 Domus aurea,
 Fœderis arca,
 Janua cœli,
 Stella matutina,
 Salus infirmorum,
 Refugium peccatorum,
 Consolatrix afflictorum,
 Auxilium christianorum,
 Regina angelorum,
 Regina patriarcharum,
 Regina prophetarum,
 Regina apostolorum,
 Regina martyrum,
 Regina confessorum,

Regina virginum,
 Regina sanctorum omnium,
 Regina sine labe originali concepta,
 Regina sacratissimi Rosarii,
 Regina pacis, ora pro nobis.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, parce
 nobis, Domine.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, exaudi
 nos, Domine.
 Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, mi-
 serere nobis.

Sub tuum præsidium confugimus, sancta Dei Genitrix ;
 nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus nostris,
 sed à periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et
 benedicta.

V. Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix.

R. Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS

Defende, quæsumus, Domine, beatâ Mariâ semper virgine
 intercedente, istam ab omni adversitate familiam, et, toto
 corde tibi prostratam, ab hostium propitius tuere clementer
 insidiis. Per Christum Dominum nostrum. Amen.

Ar Memorare

O pet sonch, o Guerc'hez Vari leun a zantelez, n'euz bis-
 koaz klevet e ve bet dilezet hini euz ar re o deuz klasket
 ho skoazel, goulennet ho sikour, hag en em erbedet ouzoc'h.
 Gant ar memes fizians, o va mam, e teuan davedoc'h, Guer-
 c'hez ar guerc'hez, diredet a ran d'ho kaout, hag e stouan
 d'ho treid, glac'haret dindan ar beac'h euz va fec'hejou. Na
 zisprijit ket va fedennou, Mamm va Zalver, mes selaouit
 anezo gant madelez, ha roit d'in va goulenn. Evelse bezet
 great. (300 devez indulj.)

Peden d'an Eal-Gardian

Eal Doue, karget d'am miret euz a bep drouk, ha d'am
 c'has d'an eüruzded, sklerijennit va spered, dioullit va c'ha-
 loun, ha kendalc'hit bepred da gaout soursi ac'hanon. Evelse
 bezet great. (100 devez indulj.)

P E D E N N

da lavaret bemdez dirak imach ar Famill Zantel

O Jezuz leun a garantez, oc'h euz dre ho vertuziou dispar ha skoueriou ho puez kuzet, santeleat ar famill o poa dibabet evid-hoc'h var an douar, plijet ganeoc'h teuler eur zell var hon hini, daoulinet ama dirazoc'h evit goulenn ho trugarez; dalc'hit sonj, ni ho ped, eo d'eoc'h ar famill-ma, p'eo guir eo en em roet, en em voestlet d'eoc'h. Difennit anezi, o Doue madelezuz, diouallit-hi eneb peb drouk, sikourit-hi en he ezommou, ha roit d'ezi ar c'hras da heuill bepred skoueriou ho famill, evit ma kendalc'ho d'ho karet ha d'ho servicha var an douar, ha ma c'hello ho meuli da viken er baradoz.

O Mari, mamm dener, ni c'houlenn sikour diganeoc'h, dre ma ouzomp pegeñ gallouduz eo ho pedennou var Galoun ho Mab divin.

Ha c'houi ive, Patriarch eüruz sant Joseph, sikourit ac'hanomp dre ho skoazell gallouduz, ha kinnigit hor goulenn da Jezuz dre zaouarn Mari, ho pried dinam.

(300 devez indulj. Leon XIII).

Pedennou berr da lavaret var-lerc'h

Jezuz, Joseph, Mari, me 'ro d'eoc'h va c'halon ha va buez; Jezuz, Joseph, Mari, sikourit ac'hanon var va zremenvan; Jezuz, Joseph, Mari, grit ma varvin en ho kompagnunez santel.

(300 devez indulj. Pi VII, 1807.)

O Jezuz, Mari, Jozeph, roit d'eomp sklerijenn ha sikour, saveteit ac'hanomp. Evel-se bezet great.

(200 devez indulj. eur vech bemdez, d'ar re hebken a zo e Breuriez ar Famill Zantel).

Evit ann Anaoun

De profundis clamavi ad te, Domine; Domine, exaudi vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes; in vocem deprecationis meæ. Si iniquitates observaveris, Domine; Domine, quis sustinebit ?

Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam sustinui te, Domine.

Sustinuit anima mea in verbo ejus; speravit anima mea in Domino.

A custodiâ matutinâ usque ad noctem, speret Israël in Domino.

Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum redemptio.

Et ipse redimet Israël; ex omnibus iniquitatibus ejus.

Requiem æternam dona eis, Domine, et lux perpetua luceat eis.

Requiescant in pace. Amen.

Domine exaudi orationem meam.

Et clamor meus ad te veniat.

OREMUS

Fidelium, Deus, omnium conditor et redemptor, animabus famulorum famularumque tuarum remissionem cunctorum tribue peccatorum, ut indulgentiam quam semper optaverunt piis supplicationibus consequantur: Qui vivis et regnas in sæcula sæculorum. Amen.

Requiem æternam dona eis, Domine.

Et lux perpetua luceat eis.

Requiescant in pace. Amen.

Evit henori ar Ver'hez Vari

Angelus Domini nuntiavit Mariæ, et concepit de Spiritu Sancto. — Ave Maria, etc.

Ecce ancilla Domini, fiat mihi secundum verbum tuum. — Ave Maria, etc.

Et Verbum caro factum est, et habitavit in nobis. — Ave Maria, etc.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix,

Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

OREMUS

Gratiam tuam, quæsumus, Domine, mentibus nostris infunde, ut qui, angelo nuntiante, Christi Filii tui incarnationem cognovimus, per passionem ejus et crucem, ad resurrectionis gloriam perducamur. Per eundem Christum Dominum nostrum. Amen.

PEDENNOU ALL DIOUZ AN NOZ

*En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel,
Evelse bezet great*

Sonjomp mad e Doue, hag adoromp anezan

Me hoc'h ador, o va Doue, gant eur guir doujans, abalamour m'emaoun dirazoc'h; c'houi a zo ker gallouduz ha me ken dister. Kredi a ran ennoc'h, dre ma 'z oc'h ar virionez memez; esperans a meuz ennoc'h, abalamour d'ho madelez; ho karet a ran a greiz kaloun, dre ma 'z oc'h din da veza karet; karet a ran ive va nesa, evel don va-unan, abalamour d'oc'h. Evelse bezet great.

Trugarekaomp Doue euz he c'hrasou

Penaoz e c'helfen-me ho trugarekât, o va Doue, euz an oll vadou oc'h euz roet d'in? C'houi oc'h euz bet atao sonj ac'hanoun; va c'hrouet o peuz euz a netra, roet oc'h euz ho puez evit va frena, skuill a rit bemdez varnoun grasou heb niver. Penaoz e c'hellin-me renta d'oc'h trugarez egiz ma 'z eo dleet? Sperejou eüruz euz ar baradoz, unanit ho moueziou gant va hini, da lavaret mil bennoz d'eun Doue trugarezuz ha ne baouez d'ober vad d'an disterra ha d'ar falla euz an dud en deuz krouet. Evelse bezet great.

**Goulennomp digant Doue ar c'hras da anaout
hor pec'hejou**

Spered Santel, Spered a sklerijen, grit d'in guelet pegen divalo, pegen noazuz eo ar pec'hed. Grit d'in kaout outan, o va Doue, eun nebeut ouz ar gassouni oc'h euz hoc'h-unan, evit m'am bezo aoun, dreist peb tra, da goueza ennan hiviziken. Evelse bezet great.

**Talomp eur zell var hor c'houstians evit anaout
ar pec'hejou or befe great hirio**

Goude an enklask-ze, e lavarer:

Akt a gontrision:

Va Doue, eur c'heuz braz am euz d'ho peza offanset, abalamour ma 'z oc'h infinimant mad hag infinimant din da

veza karet, ha ma tisplij d'oc'h ar pec'hed. Ho pedi a ran d'am fardouni dre veritou Jesus-Christ, ha me lavar d'oc'h euz a greiz va c'haloun n'hoc'h offansin mui gant sikour ho kras, hag e rin pinijen.

Promettomp stard e choumimp heb koueza er pec'hed

Na me garfe, o va Doue, n'am bije biskoaz hoc'h offanset! Mes p'oun bet diskiant aoualc'h da zisplijout d'oc'h, me ziskouezo va glac'har o ren eur vuez dishenvel diouz an hini am euz renet beteg-hen. Ia, tec'het a rin hiviziken diouz ar pec'hed, ha diouz kement tra a zoug d'ar pec'hed; ha ma roit d'in ar grasou a c'houlenann hag a c'hedan digant ho madelez, me viro ho kourc'hemennou, ha n'em bezo aoun rak poan ebet, pa vezo hano d'ho servicha. Evelse bezet great.

Pater, Ave, Credo, Confiteor.

En em erbedomp ouz Doue, ouz ar Verc'hez hag ar Zent

Bennigit, o va Doue, ar c'houst m'emaoun o vont d'ober evit nezezi va nerz, ha gellout ho servicha guelloc'h. Guerc'hez Santel, Mam da Zoue, va eal mad, va zant Paeroun, pedit evidoun ha diouallit ac'hanoun en noz-man, hed va buez, ha dreist oll da heur va maro. Evelse bezet great.

Skuillit, o va Doue, ho pennoz var va c'herent, va madoberourien, va mignoured, va enebourien. Diouallit kement hini en deuz da velet varnoun, var ar c'horf pe an ene. Sikourit ar beorien, ar veachourien, ar brizounerien, ar re glanv hag ar re a zo var ho zremenvan. Chenchit ar bec'herien, ha sklerijennit ar baianed. Grit ive eur zell a druez ouz anaoun ar purkator; plijet ganeoc'h souplât ha diverra ho foaniou, ha rei d'ezo sklerijen hag eürusdet ar baradoz da viken. Evelse bezet great.



INDULJANS AR MARO MAD

Beleien ar bed oll o deuz guir da rei induljans plenier ar maro mad d'an dud a zo var ho zremenvan: eun dra gaer, eun dra vad eo kement-se. Mes bez' ez euz tud hag a vez skoet trum, mervel a reont heb beleg var ho zro, heb amzer d'en em anaout; Pie X, dre druez ouz an dud keiz-se, en deuz, er bloaz 1904, staget induljans plenier ar maro mad ouz eur bedennik hag a c'hell beza great gant peb kristen, n'euz fors da be da vare euz he vuez. Setu hi ama:

Aotrou, va Doue, reseo a ran, a galoun vad, euz ho tourn, breman zoken, ar maro a blijo ganeoc'h digas d'in, gant he oll ankeniou, poaniou ha diezamanchou.

Ar c'risten en deuz guir c'hoant da joum nebeuta ma c'hello e tan ar purkator, a lavaro ar beden-ze eun devez benag, gant ar brasa devosion.

An dokored a lavar: « Evit gounit an induljans-se eo red » ober tri zra er memez devez: koves, kommunia ha lavaret » ar beden. » An neb a goves en dere'hent, emezo, da lavaret eo, araok an hanter-noz euz an devez ma koummunier ennan, ne c'hounit ket an induljans, rak strisoc'h eo an urz eviti eget evit an induljansou all. An neb en deuz lavaret ar beden en esper gounit an induljans, a c'hello er memez tra, beza roet d'ezan gant ar beleg induljans ar maro mad, pa vezo var he dremenvan. An den-ze ne resevo ket an induljans diou vech, ne resevo nemet eur vech *frouez* an induljans..



AKT A GONSEKRASION

d'ar Galoun Zakr, Salver ar bed

LEON XIII, 11 Even 1899.

Va Jesus dous ha mad, Salver ar bed oll, roit eur zell deomp-ni a zo daoulinet humbl dirak hoc'h aoter. Ni a zo hag a fell d'eomp beza d'eoc'h, mes evit ma vezimp startoc'h kaloun ha kaloun ganeoc'h, setu ma teu hirio pep hini ac'hanomp d'en em gonsakri d'ho Kalon Zakr.

Eur c'halz tud n'o deuz morse anavezet ac'hanoc'h; eur c'halz re all, goude beza torret ho koure'hemennou, o deuz nac'het ac'hanoc'h. O pet truez ouz an daou rum dud-se, o Jesus leun a vadelez, ha grit d'ezo oll tostât ouz ho Kaloun Zakr. Bezit, Aotrou Doue, roue ar gristenien o deuz atao servichet ac'hanoc'h, mes bezit ive roue ar vugale gollet o deuz ho tilezet, evel ar mab prodig. Grit ma tistroio ar reman d'ar gear, evit ne varvint ket gant an naoun hag an dienez.

Bezit roue ar re a zo bet dallet gant ho c'hredennou faoz, pe a zo en em zispartiet, dre ourgouill, diouz an Iliz santel; grit d'ezo oll distrei da borz ar virionez ha d'ar guir Iliz a zo unan, evit na vezo dizale, nemet eur vanden zenved hag eur pastor.

Bezit erfin roue an oll baianed a zo azezet e tenvalijen ar maro; tennit anezo euz ho dallentez, ha grit d'ezo anaout ar guir sklerijen, grit d'ezo anzaoc'h ho mestr hag ho roue. Roit d'hoc'h Iliz, Aotrou Doue, ar zilvidigez, ar peoc'h hag ar frankiz. Roit d'an oll boblou ar peoc'h hag an urz, evit ma tregarno pevar c'horn ar bed gant eur ger, unan hebken: Meuleudi da Galoun Jesus, Salver ar bed; d'Ezan henor ha gloar, hed an oll eternite. Evelse bezet great.

P E D E N

evit nevez Promesaou ar Vadisiant

EN HANO AN TAD, HAG AR MAB, HAG AR SPERED SANTEL

EVELSE BEZET GREAT.

Trindet Sakr, — Tad, Mad ha Spered Santel, — tri Fersoun en eun Doue hebken, — ho trugarekât a reomp da vezo hon lakeat e renk bugale Doue hag an Iliz, — dre zakramant ar Vadiziant. — Elez ha sent euz ar baradoz, — hor zikourit da drugarekât an Aotrou Doue euz ar c'hras kaer-ze.

Nevezi a reomp ama hirio promesaou hor badiziant. — Ia, ni a zo da Zoue, — ni a fell d'eomp trei kein d'an drouk-spered ha d'ar pec'hed.

O va Doue, dour zantel ar vadiziant a zo bet skuillet var hor penn, pa oamp bian, — hag hon ene, du gant ar pec'hed orijinel, — a zo deut guenn gant ho kras santel. — Hadet ho peuz neuze ennomp ar vertuziou kristen. — O va Jesus, — grit ma kresko hemdez ar vertuziou-ze en hon ene.

Salver benniget, rentet ho peuz d'eomp oll — en derveziou eürus-man, sae venn hor badiziant — hor maget ho peuz, hirio, gant ar gommunion zantel; — mil bennoz d'eoc'h! — Breman, ni en em ro d'eoc'h ive, — ha goude beza ho servichet mad var an douar, — grit ma 'z aimp oll d'Ho meuli er baradoz!

Evelse bezet great

Ar beden-ze a ves lennet gant unan, pe gant meur a baotr asambles, deiz Pask ar vugale.

Akt a GONSEKRASION d'ar Verc'hez

EN HANO AN TAD, HAG AR MAB, HAG AR SPERED SANTEL

EVELSE BEZET GREAT

O Mari, Guerc'hez Dinam, — rouanez an env hag an douar, — Mam da Zoue ha sikour an oll gristenien, — ni, ho pugale — daoulinet ama dirak hoc'h imach santel, — hon deus promettet miret atao feiz hor badiziant. — Karet ha servicha a raimp atao, — Jesus ho mab hag Hor Zalver.

Siouaz! gouzout a reomp pegen dinerz oump. — Setu e teuomp d'en em rei d'eoc'h korf hag ene, — ha da lakât hor promesaou dindan ho skoazel. — Ni ho karo hag ho meulo heb ehana, — ni a vezo pur ha sentuz evelloc'h. — O Mam garantezuz, diouallit hon eneou; — pellait diouzomp peb drouk, — grit d'eomp entent pegen noazuz eo ar pec'hed, — ha peger mad eo karet Jesus a greiz kaloun.

Roit ho pennoz, Guerc'hez Sakr, — da gement hini en deuz hor zikouret da zeski hor relijion, d'hor c'herent dreist-oll, — grit ma c'houmint unanet ganeomp en ho karantez. — Saveteit anezo, o Mam drugarezuz, — grit ma c'hellimp ho kuelel oll asamblez er baradoz, — ha meuli Doue ganeoc'h da viken.

Evelse bezet great.

Peden da Zant Joseph

Da veza lavaret e miz here.

Ouzoc'h, sant Joseph, ec'h en em erbedomp en hon anken, ha goude beza goulennet skoazel ho pried meurbet santel, e reketomp ive gant fizians ho c'hini. Abalamour d'ar garantez hoc'h unanas gant ar Verc'hez Dinam, mam da Zoue, ha d'an deneredigez a dad a oue en ho kaloun evit ar Mabik Jesus, plijet ganeoc'h, ni ho ped, ober eur zell a vadelez ouz heritach Jesus-Christ, prenet gant he c'hoad, hag hor zikour en hon ezomou dre ho kalloud hag ho souten.

O mirer ar Famill divin leun a furnez, diouallit ar bobl dibabet gant Jesus-Christ; Tad meurbed karantezus, pellait diouzomp peb fazi ha peb hudurnez; o c'houi, hon difennour ar galloudusa, er stourmad-man hon eus gant prins an den-valijen, hon harpit euz a c'horre an nenv. Evel m'oc'h eus, guechall, diframmet ar Mabik Jesus digant ar maro prest d'her skei, evelse, diouallit breman Iliz santel an Aotrou Doue diouz lasou he enebourien ha diouz peb drouk; var bep hini ac'hanomp astennit ho skoazell bepred, ma c'hel-limp, o c'heuill ho skouer ha gant ho sikour, beva santelamant, kaout eur maro mad, ha digouezout en eürusdet eternal ar baradoz.

Evelse bezet great.

FAZIOU

Pajen	Linenn	
331	15	<i>E leac'h</i> : ar Pab Leon IX her greaz kardinal, hag hel lakeaz zilua veze roet d'ezhan ; <i>Lennit</i> : hag hel lakeaz da dosta d'ezhan.
591	12	<i>E leac'h</i> : ez eaz en hent en eur lavaret ; <i>Lennit</i> : ez eaz en hent o tougen imach Hor Zalver, en eur lavaret.

Al lenner a gavo, ama hag ahont, faziou all el leor-man : eul lizeren benag choumet a istribill ouz ar c'harz, met ar faziou-ze a zo dister ; al lenner ho difazio dre ma yelo.



E

Pajen
746 Stez Elisabeth a Hongric, 19 Du.
430 Stez Elisabeth, Rouanez, 8 Gouere.
316 S. Eozen, Beleg, 19 Mae.
350 S. Erasm, hag he Gomp., 2 Even.
698 Stez Ermelind, 29 Here.
115 S. Eucher, Eskop, 20 C'houevr.
810 S. Euzeb, E. ha M., 16 Kerzu.
201 S. Eustach, Abad, 29 Meurz.
604 S. Eustach, Merzer, 20 Guengolo.
691 S. Evarist, Pab ha M., 26 Here.

F

434 Stez Felicite, he 7 Mab, 10 Gouere.
750 S. Felix a Valois, 20 Du.
564 S. Fiakr, Ermit, 3 Guengolo.
256 S. Fidel, Merzer, 24 Ebrél.
638 S. Fransez Assis, 4 Here.
597 S. Fransez (Pemp Gouli), 17 Guengolo.
209 S. Fransez a Baol, 2 Ebrél.
652 S. Fransez Borjia, Jesuist, 10 Here.
355 S. Fransez Caracciolo, 4 Even.
64 S. Fransez a Zall, Eskop, 29 Genver.
780 S. Fransez Xavie, 3 Kerzu.
154 S. Franseza, Intanvez, 9 Meurz.
715 P.E. Franseza Amboaz, 5 Du.
532 Stez Franseza a Chantal, 21 Eost.

G

188 S. Gabriel, Arc'heal, 24 Meurz.
583 D.E. Gabriel Perboyr, 11 Guengolo.
576 Ginivelez ar Verchez, 8 Guengolo.
426 S. Goar beleg, 8 Gouere.
689 S. Goueznou, Eskop, 25 Here.
416 S. Goul'hen, Eskop, 1 Gouere.
164 S. Gregor, Pab ha D., 13 Meurz.
331 S. Gregor VII, Pab, 25 Mae.
170 S. Gregor, Ermit, 16 Meurz.
292 S. Gregor a Nazians, D., 9 Mae.
744 S. Gregor, Den ar Miraklou, 17 Du.
278 S. Gouel ar Groaz Kavet, 3 Mae.
590 S. Gouel ar Groaz Savet, 14 Guengolo.
140 S. Guennole, Abad, 3 Meurz.
109 S. Guevrok pe Girek, 17 C'houevr.
585 S. Gui, kloc'her, 12 Guengolo.
23 S. Guillou, Arc'h. Bourj, 10 Genver.
400 S. Guillou, Abad, 25 Even.

G

Pajen
482 S. Guillou, Sant Briek, 30 Gouere.
710 S. Guinal, Abad, 3 Du.
808 S. Gunthiern, Manac'h, 15 Kerzu.

H

658 Stez Heaudez, Landunvez, 12 Here.
682 Stez Hedwij, Intanvez, 22 Here.
324 S. Herbot, Ermit, 22 Mae.
219 D.E. Hermann, 7 Ebrél.
232 S. Hermenejild, Merz., 13 Ebrél.
445 S. Herri, Impalaer, 15 Gouere.
383 S. Herve, Ermit, 17 Even.
32 S. Hiler, Doktor, 14 Genver.
30 S. Honorat, Arc'heskop, 13 Genver.
21 S. Honore, Marc'hadour loened, 9 Genver.
497 S. Hor Zalver var Menez Thabor, 6 Eost.
221 S. Hospis, Ermit, 8 Ebrél.
770 S. Houardon, Eskop, 29 Du.
207 S. Hug, Eskop, 1 Ebrél.
523 S. Hyacinth, Manac'h, 18 Eost.

I

839 S. Ian, A. hag Avieler, 27 Kerzu.
285 S. Ian, Gaoter eol bero, 6 Mae.
759 S. Ian ar Groaz, Doktor, 24 Du.
131 S. Ian a Vandier, 27 C'houevr.
372 S. Ian a Zant-Fagondez, 12 Even.
196 S. Ian Damaseen, 27 Meurz.
830 S. Ian Diskalseat (Zantik Du), 24 Kerzu.
152 S. Ian Doue, 8 Meurz.
527 S. Ian Eudes, 19 Eost.
381 S. Ian Fransez Rejis, 16 Even.
439 S. Ian Gualbert, 12 Gouere.
403 S. Ian ha Paol, M., 26 Even.
198 S. Ian Kapistran, 28 Meurz.
678 S. Ian Kenti, 20 Here.
203 S. Ian Klimak, 30 Meurz.
60 S. Ian Chrysostom, 27 Genver.
504 S. I. M. Vianney, Ars, 9 Eost.
86 S. Ian Matha, 8 C'houevr.
309 S. Ian Nepomuseen, M., 16 Mae.
398 S. Ian Vadezour, 24 Even.
552 S. Ian Dibenn Eost, 29 Eost.
306 S. Ian Vadezour ar Zall, 15 Mae.
72 S. Ignas, Eskop ha M., 1 C'houevr.
484 S. Ignas a Loyola, 31 Gouere.
718 S. Iltud, Abad, 6 Du.
296 P.E. Imelda, 11 Mae.
842 S. Innosanted Santel, 28 Kerzu.

I

Pajen
405 S. Irenee, Merzer, 27 Even.
213 S. Isidor, Doktor, 4 Ebrél.
362 S. Isidor, Labourer, 7 Mae.
448 S. I. V. Garmez (Skapular), 16 Gouere.
613 S. I. V. sikour ar sklaved, 24 Guengolo.

J

273 S. Jakes ha Philippe, Eb., 1 Mae.
470 S. Jakez Zebedec, Ab., 25 Gouere.
138 S. Jaoua, Eskop, 2 Meurz.
602 S. Janvier, Merzier, 19 Guengolo.
104 Stez Jeanne a Valois, 15 C'houevr.
343 Stez Jeanne d'Arc, 30 Mae.
532 Stez Jeanne Franseza a Chantal, 21 Eost.
6 Stez Jenovefa, Guerc'hez, 3 Genver.
378 Stez Jermana Cousin, 15 Even.
514 S. Jermen a Aoxerr, 13 Eost.
628 S. Jerom, Doktor, 30 Guengolo.
458 S. Jerom Emilian, 20 Gouere.
739 Stez Jertrud, Guerc'hez, 15 Du.
497 Jesus-Christ var ar Menez, 6 Eost.
76 S. Jildas, Abad, 3 C'houevr.
521 S. Joachim, Tad ar Verchez, 17 Eost.
254 S. Jorj, Merzer, 23 Ebrél.
737 S. Josaphat, Eskop ha M., 14 Du.
177 S. Joseph, Pried Mari, 19 Meurz.
548 S. Joseph Kalasanz, 27 Eost.
599 S. Joseph a Gupertino, 18 Guengolo.
812 S. Judicael, Roue Manac'h, 17 Kerzu.
62 S. Julian, ar Mans, 28 Genver.
106 Stez Juliana, G. ha M., 6 C'houevr.
387 S. Juliano Falconieri, 19 Even.
234 S. Justin, Merzer, 14 Ebrél.

K

41 Kador sant Per e Rom, 18 Genver.
119 Kador sant Per en Antioch, 22 C'houevr.
499 S. Kajetan, 7 Eost.
663 S. Kallixt, Pab, 14 Here.
453 S. Kamill Lellis, 18 Gouere.
566 Stez Kandid pe Vennok, 4 Guengolo.

K

Pajen
142 S. Kasimir, Prins, 4 Meurz.
762 Stez Katell pe Gatherin, M., 25 Du.
184 Stez Katell a Zueed, 22 Meurz.
270 Stez Katell a Zienn, 30 Ebrél.
722 S. Ke, Eskop hag Ermit, 8 Du.
97 Kenvreur, Servich, Mari, 12 C'houevr.
702 S. Kintin, Merzer, 31 Here.
109 S. Kiriek pe Guevrok, 17 C'houevr.
512 Stez Klara, Guerc'hez, 12 Eost.
535 Stez Klara a Vontfale'hon, 22 Eost.
757 S. Klemant, Pab ha M., 23 Du.
352 Stez Klotild, Rouanez, 3 Even.
158 Stez Koletta, Guerc'hez, 11 Meurz.
668 S. Konogon, Eskop, 16 Here.
113 D.E. Konrad, Trede Urz, 19 C'houevr.
826 D.E. Konrad, Manac'h, 22 Kerzu.
791 Konsepsion Dinam ar Verchez, 8 Kerzu.
801 S. Korantin Kemper, 12 Kerzu.
620 S. Kosm ha Damian, M., 27 Guengolo.
451 Stez Kristina, G. ha M., 17 Gouere.
466 S. Kristoph, Merzer, 24 Gouere.
278 Kroaz Hor Zalver kavet, 3 Mae.
590 Kroaz Hor Zalver savet, 14 Guengolo.

L

507 S. Laurans, Merzer, 10 Eost.
568 S. Laurans Justinian, 5 Guengolo.
228 S. Leon I, Pab, 11 Ebrél.
407 S. Leon II, Pab, 28 Even.
230 Stez Lidwin, Guerc'hez, 12 Ebrél.
510 S. Ligor, Doktor, 11 Eost.
611 S. Lin, Pab, 23 Guengolo.
391 S. Lois Gonzag, 21 Even.
543 S. Lois Roue Frans, 25 Eost.
168 S. Lonjin, Merzer, 15 Meurz.
796 Loretta, Ti ar Verchez, 10 Kerzu.
180 S. Lubin, Eskop, 20 Meurz.
194 S. Ludjer, Eskop, 26 Meurz.
673 S. Lukas, Avieler, 18 Here.
803 Stez Lusia, G. ha M., 13 Kerzu.

M

368 Stez Mac'harit, Rouanez, 10 Even.
129 Stez Mac'harit a Gortone, 26 C'houevr.
670 Stez Mac'harit-Mari, 17 Here.

M

Pajen
 226 S. Maker, Arc'heskop, 10 Ebrel.
 821 S. Malachi, 20 Kerzu.
 43 Malani, Eskop, 19 Genver.
 855 Tad Maner, divarlerc'h.
 587 S. Maorill, Esk., 13 Guengolo.
 259 S. Mark, Avieler, 25 Ebrel.
 385 S. Mark ha Marsellin, M., 18 Ebrel.
 191 Gouel Maria Veurz, 25 Meurz.
 519 Gouel Maria Hanter Eost, 15 Eost.
 693 S. Magloar, Eskop, 27 Here.
 395 P.E. Mari Oigni, 23 Even.
 211 Stez Mari Ejiptianez, 3 Ebrel.
 462 Stez Mari Madalen, 22 Gouere.
 340 Stez Mari Madalen a Bassy, 29 Mae.
 36 S. Marsel, P. ha M., 13 Genver.
 350 S. Marsellin hag he Gomp., 2 Even.
 479 Stez Martha, Guerc'hez, 29 Gouere.
 727 S. Martin, Tours, 11 Du.
 729 S. Martin, Pab, 12 Du.
 67 Stez Martina, Merzerez, 30 Genver.
 124 S. Mathias, Abostol, 24 C'houevrer.
 741 S. Maudez, Abad, 16 Du.
 19 S. Maur, Abad, 8 Genver.
 641 S. Mauris, Abad, 5 Here.
 768 S. Maxim, 28 Du.
 606 S. Maze, Avieler, 21 Guengolo.
 328 Metalen burzudus, 24 Mae.
 365 S. Medard, 8 Even.
 847 S. Meen, Abad, 30 Kerzu.
 655 S. Melar, Merzer, 11 Here.
 156 40 Merzer Sebast, 10 Meurz.
 626 S. Mikeal, Arc'heal, 29 Guengolo.
 290 S. Mikeal, menez Gargan, 8 Mae.
 852 Dom Mikeal Nobletz, divarlerc'h.
 281 Stez Monika, Intanvez, 4 Mae.

N

477 S. Nazer ha Sels, M., 28 Gouere.
 833 Gouel Nedelek, 25 Kerzu.
 299 S. Neree hag he Gomp., 12 Mae.
 847 S. Neven, Abad, 30 Kerzu.
 646 S. Nikaz, Merzer, 7 Here.
 787 S. Nikolas, Eskop Myr, 6 Kerzu.
 580 S. Nikolas Tolantin, 10 Guengolo.
 360 S. Norbert, Arc'h., 6 Even.

O

Pajen
 3 S. Odilon, Abad, 2 Genver.
 705 Oll Zent, 1 Du.
 245 Stez Opportuna, 19 Ebrel.
 P
 413 S. Paol, Abostol, 30 Even.
 56 S. Paol gounezet d'ar feiz, 25 Genver.
 161 S. Paol a Leon, Kastell, 12 Meurz.
 34 S. Paol, Ermit, 15 Genver.
 420 S. Paol, E. ha M., 3 Gouere.
 266 S. Paol ar Groaz, 28 Ebrel.
 393 S. Paolin a Nol, Eskop, 22 Even.
 311 S. Paskal Baylon, 17 Mae.
 240 S. Patern, Eskop, 16 Ebrel.
 172 S. Patrik, Eskop, 17 Meurz.
 700 Stez Pelaji, 30 Here.
 597 Pemp Gouli sant Fransez, 17 Guengolo.
 410 S. Per, Abostol, 29 Even.
 486 S. Per en Ercou, 1 Eost.
 268 S. Per a Veron, Merzer, 29 Ebrel.
 675 S. Per Alkantara, 19 Here.
 121 S. Per Damian, D., 23 C'houevrer.
 578 S. Per Klaver, 9 Guengolo.
 782 S. Per Kryzolog, D., 4 Kerzu.
 69 S. Per Nolask, 31 Genver.
 321 S. Per Selestin, Pab, 21 Mae.
 593 S. Perek, 15 Guengolo.
 147 S. Perpetua, Merzerez, 6 Meurz.
 273 S. Philipp ha S. Jakez, 1 Mae.
 537 S. Philipp Beniziü, 23 Eost.
 333 S. Philipp Neri, 26 Mae.
 283 S. Pie V, Pab, 5 Mae.
 99 S. Polyuect, Merzer, 13 C'houevrer.
 58 S. Polykarp, Merzer, 26 Genver.
 366 S. Prim hag he Gomp., 9 Even.
 437 S. Pulkeri, Rouanez, 11 Gouere.

R

686 S. Raphael, Arc'heal, 24 Here.
 631 S. Remi, Arc'heskop, 1 Here.
 557 S. Remond Nonnat, 31 Eost.
 32 S. Remond Pennafort, 23 Genver.
 261 S. Rikier, Abad, 26 Ebrel.
 422 D.E. Robert Arbrissel, 4 Gouere.
 326 S. Rogasian ha Donasian, 23 Mae.
 525 S. Rok, 18 Eost.
 84 S. Romuald, Abad, 7 C'houevrer.
 348 S. Ronan, Eskop, 1 Even.
 14 S. Gouel ar Rouaned, 6 Genver.

R

Pajen
 555 Stez Roza a Lima, 30 Eost.
 573 Stez Roza a Viterb, 7 Guengolo.
 133 S. Ruelin, Eskop, 28 C'houevrer.
 570 S. Salomon, roue Breiz, 6 Guengolo.
 475 S. Samson, Eskop, 27 Gouere.
 145 S. Sane, Eskop, 5 Meurz.
 45 S. Sebastian, Merzer, 20 Genver.
 97 Seiz Kenveur, 12 C'houevrer.
 434 S. Seiz Breur, Merzer, 10 Gouere.
 828 S. Servul, Paour, 23 Kerzu.
 S
 755 Stez Sesilia, Merzerez, 22 Du.
 684 S. Severin, Eskop, 23 Here.
 615 S. Sezni, Eskop, 25 Guengolo.
 448 Skapular Karmez, 16 Gouere.
 91 Stez Skolastika, Guerc'hez, 10 C'houevrer.
 695 S. Simon ha Jud, Eb., 28 Here.
 111 S. Simeon, Merzer, 18 C'houevrer.
 11 S. Simeon Stylit, 5 Genver.
 1 S. Sirkonsizion Hor Zalver, 1 Genver.
 252 S. Soter, Pab ha M., 22 Ebrel.
 806 S. Spiridion, Eskop, 14 Kerzu.
 734 S. Stanislas Kastka, 13 Du.
 287 S. Stanislas, Eskop ha M., 7 Mae.
 734 S. Stephan Kenta M., 26 Kerzu.
 490 S. Stephan, kavet he gorf, 3 Eost.
 562 S. Stephan, Roue, 2 Guengolo.
 595 S. Syprian, Eskop ha M., 16 Guengolo.
 617 S. Syprian ha Justina, 26 Guengolo.
 502 S. Syriak hag he Gomp., 8 Eost.
 428 S. Syriak ha Method, 7 Gouere.
 89 S. Syriak Alexandrie, 9 C'houevrer.
 174 S. Syriak Jerusalem, 18 Meurz.
 389 S. Sylvester, Pab ha M., 20 Even.
 764 S. Sylvester, Abad, 26 Du.
 849 S. Sylvestr, Pab ha M., 31 Kerzu.

T

658 S. Tanguy ha santez Heudez, 12 Here.
 127 S. Tares, Eskop, 25 C'houevrer.
 460 S. Thenenan, Eskop, 21 Gouere.

T

Pajen
 26 S. Theodos, Abad, 11 Genver.
 666 Stez Thereza a Avila, 15 Here.
 623 Stez Thereza ar M. J., 28 Guengolo.
 432 S. Thibaut, E., 9 Gouere.
 823 S. Thomas, Abostol, 21 Kerzu.
 149 S. Thomas Akin, D., 7 Meurz.
 844 S. Thomas Kantorbery, 29 Kerzu.
 608 S. Thomas a Villeneuve, 22 Guengolo.
 796 S. Ti Santel Loretta, 10 Kerzu.
 54 S. Timothee, S. ha M., 24 Genver.
 82 S. Tit, Eskop, 6 C'houevrer.
 441 S. Tivisio, Eskop, 11 Gouere.
 720 S. Tremeur, Merzer, 7 Du.
 775 S. Tugdual, Eskop, 1 Kerzu.
 U
 680 Stez Ursula, G. ha M., 21 Here.
 V
 102 S. Valantin, Merzer, 14 C'houevrer.
 223 Stez Valtrud, Intanvez, 9 Ebrel.
 606 S. Vaze, Abostol, 21 Guengolo.
 313 S. Venans, Merzer, 18 Mae.
 566 Stez Vennok, 4 Guengolo.
 576 ar Verc'hez (Ginivelez), 8 Guengolo.
 328 ar Verc'hez, sikour ar gristenien, 24 Mae.
 418 ar Visitation, 2 Gouere.
 753 ar Verc'hez an Templ, 21 Du.
 328 S. ar Vetalen burzudus, 24 Mae.
 504 S. Vianney, euz Ars, 9 Eost.
 186 S. Viktorian, Merzer, 23 Meurz.
 50 S. Visant, Merzer, 22 Genver.
 215 S. Visant Ferrier, 5 Ebrel.
 455 S. Visant a Baol, 19 Gouere.

Y

316 S. Yvon, eil Patroun Breiz, 19 Mae.

Z

705 Oll Zent, 1 Du.
 546 S. Zephyrin, Pab, 26 Eost.
 263 Stez Zita, Guerc'hez, 27 Ebrel.



